



Archives et bibliothèque diocésaine de Quimper et Léon

Document numérisé

Source : <http://catholique-quimper.ccf.fr/diocese/bibliotheque-et-archives.html>

2011

FEIZ HA BREIZ,

KELOU A BEP BRO, HA KENTELIOU VAR BEP TRA,

DIGASSET BEP SUL

Da guement Christen a goms ar brezouneec.

Eun Abonnamant d'ar Gazeten à goust :

Evit eur bloas..... DAOU SCOUET.
Evit c'huec'h miz..... EUR SCOUET.
Evit tri miz..... C'HUEC'H REAL.
Eur gazeten ebken..... DAOU VENNEC.

Ar baecamant a dle beza grêat araog caout ar gazeten.

ALIQU.

Ar scrijou a ve c'hoant da lacat er gazeten a dleer da adressi oll d'an Autrou MORVAN, Beleg e Kemper.

Ar paeamanchou a dleer da adressi d'an Aotrou SALAUN, ebken. An abonnamant a guemerer e ti an Aotrou SALAUN, librer, ru Kereon, e Kemper.

KEMPER, 2, C'huevrer 1867.

O tiguéri au trede-bloavez evit *Feiz ha Breiz*, ne velomp ket e ve netra da lavaret nemet ar pez a lavaremp varlene o tiguéri an eil bloas. Al lennerien a zalc'h ato da vont var gresc, hag ar pez a c'houlennomp eo ma zai ive ato var gresc ar vad a ell da ober etouez an dud ar gazetennic-ma.

Eur guer ou cus da lavaret d'ar re a zigas pennadou scrit evit beza laket er gazeten. Hiniennou a zigas avechou pennadou scrit ep hano ebet, ep ma c'houlfet digant piou e teuont; a scrif liziri ep ho zina. Bez'e c'hell marteze unan bennag beza souezet dre ma o deus digasset deomp eur pennad scrit bennag evelse, ha n'o deus ket gueleter ar pennadou scrit-ze var ar gazeten. Discleria a reomp eur vech evit mad, penaus digas deomp evelse pennadou scrit, liziri ep hano den, a so coll he boan. Ar pennadou scrit-ze ne vezint ket laket e *Feiz ha Breiz*. N'em eus ket izom da lavaret perag; an oll her goar. Kement hini a zonjo mad a anzavo, me gred, ne c'houlent ket re ar re a guemer ar garg eus a bennadou scrit great gant re-all, o c'houlent anaout perc'hien ar scrit, evit gallout scrifa dezhan hag en em glevet gantha, ma vé izom.

Kementse ne vir ket oc'h ar re a scrif, da jom, mar keront, ep lacat ho hano var ho fennadou scrit er gazeten. Ma c'hotreer dezho chom evelse e cuz, an dra-ze ne zell nemet oc'h al lennerien, ha ne ell ket coeza var ar re so red d'ezho en em garga, ha dirag al lenner, ha dirag al lezen, eus a guement pennad scrit a vouller er gazeten.

Evel varlene, e vezo kendalc'het da gas ar gazeten d'ar re o deus he c'hemeret, nemet digas a rafent ar follien en dro gant ar guer *refusé*. Dre ma zeus calz hag a so echu brema ho abonnamant, e vercomp kement-ma.

Brema ez eomp adarre d'hor c'heleier.

Ne deus ket par d'ar bobl fidel evit dere'hel mad d'he c'hizion coz, dreist oll d'al leac'hiou a zevosion, d'ar pelerinachou, d'ar plasou santel ma zeo bet boas d'ho darempret. Mar en deus gueleter he dud coz o tarempered eul leac'h, oc'h enori eur zant bennag dreist ar re all, e kendalc'ho d'hen ober ive. Caer a ve sevel e leac'h all ilizou caer en enor da eur zant, d'al leac'h ma eo bet enoret ar zant-ze da guenta, eo e talc'ho an dud da vont ato. Kementse a velomp dalc'h mad en hor bro, ha ne deo ket e Breiz-izel epken eo e veler ar c'hiz-ze. Caze-tennou Paris a gomz eus a c'houl Santez Jenovefa hag eus an navet great en enor d'ar zantez er guær vras. Epad eis pe nao devez, iliz sant Stefan eleac'h m'ema bez ar zantez, a veze bemdez leun a dud. Eun dra gaer oa gueleter, azaleg c'huec'h heur dioc'h ar miatin, tud o tont di a vandennou, neket epken eus a guær, mes c'hoas di var ar meziou tro var dro, ha kementse petra bennag ma voa eriz an amzer. Santez Jenovefa eo patronez Paris, bez'ez eo ato ive ar zantez caret er guær-ze. Ar re zoken o deus nebeut a feiz, n'o deus ket collet ar zonc'h eus ho patronez. Oll goazet ha merc'hed, coz ha iaouanc, ho gueleter, prez varnezho, o tont da zaoulina var he bez.

Bez ar zantez, evel ma ou eus lavaret, a so en iliz Sant Stefan. Hogueu he relegou n'emaint mui eno. Douguet int bet da eun iliz caer savet dindan an hano a zantez Jenovefa. Mad, pe guer caer bennag ma zeo an iliz-ze, petra bennag ma ema relegou ar zantez enhi, ne ket di eo ez ea ar bobl, mes d'an iliz all eleac'h ne deus nemet ar bez. Unan bennag a velot ive o pidi e Santez Jenovefa, mes an niver braz a ica da Zant Stefan eleac'h ma zeo bet enoret ar zantez abaoue he maro. An deis ma c'hechue an navet, en iliz-ze ne allet ket finval kel leun, ker chec oa.

Kementse a dle beza grêat poan speret d'an dud ep relijion, rag red mad eo dezho anzaou penaus, caer o deus, e chom c'hoaz eun dra bennag a feiz, eun dra bennag a zevosion e calon ar Francizien.

Rom. — Lavaret a rer en deus sonch hon Tad Santel

ar Pap, d'ar zolanite a vezo e Rom e fin miz Even, da ziscleria evit mad mister an Assomption, ha lavaret eo, da ziscleria ez eo pignet ar Ver'hez en Env corf hag ene. Kementse a dle heuilla he c'honception didac'h. O veza bet concevet ep pec'het, ne dle ket ive he c'horf beza chomet da vrema en douar. Evelse Pii Nao sen de-vezo great evit gloar mam Doue kement a ell beza great var an douar. An dra-ma gouscoude ne deo ket eun dra sur, mes comz a rer eus a guementse.

Unan eus ar breuriezou caera a Rom, eo an hini so bet savet gant ar Pap Gregor Pempz evit skigna ar feiz dre ar bed. Gouel ar Rouanez eo deiz ar pardon er breuriez-ze. An iliz-ne deo ket bras; ne deus enhi nemet pemp oter. Eno deiz ar pardon e lavaret an oferen e kement iez pe langach ma c'haotre an iliz e ve lavaret. Evelse eus a bemp oferen a lavaret var eun dro, unan a lavaret e iez Chaldeen, eun all e iez Copht, eun all e Syriac, eun all en Armenien hag eur bempet e Grec; hag evelse e meur a iez all. Escop an Abyssini a zo morian; evel ma lavare an oferen gant eur gazal arc'hant, al liou gnenn-ze a ziscoeze muioc'h al liou da pod eus he zrem hag eus he zaouarn.

Etonez ar Zaozonet so deut da Rom a nevez zo, ez eus eun den iaouane c'huoc'h vloas varnugent hag a gomzer cals anezhan. Ne deus nemet eur miziou bennag a-baoue ma zeo distroet d'ar guir relijion. N'eus ket pell eo bet paeron da bemp scoaler a Oxford pere so ive deut da veza catoliket. An den iaouane-ma en deus collet couls lavaret he oll danvez o kuitaat he fals relijion. Eleac'h tost da c'huoc'h cant mil lur leve a dle da gaout, ne deus lezet gautha nemet pemp mil lur varnugent. Arc'hescop Wesminster o veza he aliet da vont da Rom da glonerdi ar Francizien, ez eo eat en hent dioc'htu, hag en deus beachet noz deiz ep eana azalec Londrez bete Rom. Hirio ema er c'blouerdi, hag en deus sonch da veza beleg.

Comzet on eus ar c'hren-douar so bet en Aljeri an eil a vis guenver. Hoguen ar c'hazetennou a zalc'h ato da gomz eus ar c'hren-douar-ze; scrijuz oa beza er vroze. En Aljer, an tiez oll a stracle hag a hije evel guez bransellet gant an avel. Eno gouscoude ne deus bet nemet aoun; ne deus coezet nemet eur c'hos ti dister bennag, ha n'eus chomet den dindanho. Er c'heriou all hag e cals a gueriadennou var ar meaz en deus great muioc'h a zistruch. Eno an oll diez so bet discaret, ha cals a dud so bet flastret dindanho. An dud a velet eat er meziou pell dioc'h ho ziez; ac'hano e tistroent da glasc ho zud. Ne oufe den lavaret ar rann-galon eus an dud keiz-ze o clasc ho c'herent tosfa chomet dindan an tiez, ar mogueriou coezet. Ho oll danvez, ebatal hag all so collet, hag ar re binvidica kent a vane bara dezho brema. En unan eus ar c'heriadennou edot oc'h ebatal, o tansal evit ar bloas nevez, ha n'oat ket eat c'hoas da gousket. An ebat, evel a velit, en deus bet eun ean trist. Ar c'hren-douar a so deut en eun taol,

ha meur a hini eus ar re a voa oc'h ebatal a so bet flastret ep caout zoken an amzer da c'houzout eus a beleac'h e teue ar maro dezho. Ne deo ket epken er c'heriou en deus great droug ar c'hren-douar. Ar blenen ive a so great distruch enhi. Guelet a reat moguet ha tan o sailla eus a droat menez Atlas, hag ive eus a greiz ar blener.

Unan eus ar bourgadennou distrujet en devoa, eur pennadig a voa, c'hoarezet Sant Visant a Baol. Ar reze a so brema providans tud ar vourc'haden-ze. Mont a reont noz deiz da zicour an oll ha dreist-oll ar re so bet gouliet ha mac'hagnet. Rag mar deus lazet meur a hini, ez eus c'hoas muioc'h hag a zo torret eun ezel bennag dezho. Unan eus ar c'hoarezet so bet ive tost dezhi beza flastret. Eur chiminal so coezet couls lavaret varnezhi, hag eo bet gloazet eun troad dezhi; mes evit kementse ez a en eur chilgamat da gas sicour e kement leac'h ma zeus izom.

Er c'heriou eleac'h ne deo ket discaret oll an tiez, ar re so chomet en ho za ne delont nemeur hirroc'h evit ar re so coezet. Ar mogueriou so fraillet ha faoutet oll, ha den ne gred chom da gousket enho, rag bep en amser an douar a ra ato crenadennou.

An noz varlerc'h ar c'hren-douar e vone guelet eun dra burzudus, eme ar scrifagner a lavar kement-ma. Pa zavas al loar, e voa soum savet he c'herniel en ear, evel ma vez peinet dindan treid skeuden ar Ver-c'hez concevet ep pec'het. Ar re a voa eno ep ti nag oz, a lavare e velent a zioc'h al loar skeuden ar Ver-c'hez didach evel eur seleuren venn gant he c'harunen a zaouzeg stereden. Var guementse e voue lavaret cals traou, mes rei a reas calon dezho oll; hag en em-lakejont neuze da bedi Mam Doue ha da lavaret he litaniau. (G. M.)

E kichen ker Leipsik, daou vreur o voa a toulla eur puns. Toullt oa gantho doun avoalc'h couls lavaret, pa deuas ar c'hoatach eus a c'hinou ar puns da vancout, hag e coezas varnezho eur bern douar. Epad tri dervez e voue labourer da denna an douar-ze er meaz, evit mont beteg an daou zen a voa sebeliet dindan. Mes coll a rejor courach. Pell so int maro, a lavaret. Ho mam epken a lavare e ranket ho c'haout beo pe varo. En em lacat a rejot adarre da zieubi ar puns, mes ep dale e voa ken danjerus al labour, ma ne grede den disken en toul, ha ma comzet da stanca ar puns ha da lacat var gorre eur mean bez evit derc'hel sonch eus an daou bunser. Mes ar vam ne folle ket dezhi a draou evelse. Mont a reas da gaout ar c'houarnerien hag e reas kement ma rojont urs d'en em lacat adarre da doulla ha ma casjont tud evit kementse. Ar re-ma goude beza poaniet noz deiz epad pemp dervez ha pemp nosvez, a deuz abenn da vont beteg an daou vreur. Ho c'haout a rejont diners, toc'hor bras, mes beo oant. Unneg dervez oant bet en toul-ze dindan an douar. Lod eus ar c'hoatach o coeza o doa great evel eun doare lochen a zioc'h ho fenn, ha miret oc'h an douar d'ho mouga.

Sonjit pebez mantr calon a dle an daou zen-ze da veza bet eno epad keit amzer! Clevet a reant comzou ar re a labourer d'ho zenna er meaz. Clevet a reant anezho a lavaret e collent ho foan, hag oa red lazer al labour-ze a gostez hag eana. Clevet a reant ez cat da stanca ar puns ha da lacat eur mean bez varnezho l. G. M.

EUR SKOL-NOZ.

VAR AB ZUL.

(PEVARE PENNAD).

An Aotrou Ambroaz: « Assa! va mignoned ker, gwelet a ran gan plijadur e teu, heb eun nebeud, ar sklerijen euz ar feiz da antred en ho kalonou, ha dreiz-oc'h e kalonou an dud all euz ar barrez. Gwellat a ra an traou en em touez, dre c'hras Doue! Ia, mil bennoz da Zoue! Mil bennoz d'he Zent! Gwellat a ra an traou gan eom! Kemmerom eta kourach an eil hag egile ac'hantomp, va breudeur ker. Ar zül ispisial a zeu war ar gorre taol-ha-taol. Abarz em bloaz ac'hann, em heuz an esperans, e vezo savet d'ar renk ma tle delc'her e touez tud pere o deuz an ear da gaout badizyant war ho fenn, an henor da zougen an ano a gristenyen. Labourer, poanyon eta, va mignoned ker, da zont da veza ar pezh a fell da Zoue e vefem, e kenver ar zül da genta. Men lavaret em beuz d'eo'h kentoc'h eged hizyo, ouspenn eur wech, ha nasificanin d'hen lavaret d'eo'h; pa vezo miret mad, santelezet oc'hiz ma eo dleet an deiz binniget euz ar zül e parrez M... parrez M... a zo salo! Rag an traou all a zeuio da heul.

« Ia, va breudeur muia karet, ar respet evid ar zül a zo kresket hag a gresk a zeiz da zeiz en ho touez. O! joa em beuz-oc'h! Ha-ma! evid sikour ar respet-ze evid deiz an Aotrou Doue da greski bepred muioc'h muien ho touez, evid skrifa donnoc'h don en ho spered hag en ho kalon an etz, ar gasoni ouz kemment a zeu da zaotra, da brofani an deiz binniget-se, e zan, er gentel a hizyo, da lavaret d'eo'h, e berr gomzou, an oll bec'hejou a gever er zaotredigez pe er brofanedigez euz ar zül dre al labourou difennet, an oll dismegans a reom da Zoue dre ar pec'hed-ze. Deja em beuz lavaret d'eo'h an oll sort bec'hejou a reer o labourat, da zül, a eub difenn an Aotrou Doue, mes ar gentel-ma e zan da zastum evel en eun daoleann kemment em beuz lavaret d'eo'h war an poent-ze, evid ma hen gwelfot sklerroc'h ha ma raio muioc'h a offed war ho sperejou. »

I.

PEC'HED A ZIZENTEDIGEZ.

« Lavaret em beuz d'eo'h kentoc'h eged hizyo, va mignoned ker, ez euz pec'hed a zizentedigez ouz Doue, o labourat da zül. Doue en deuz difennet ouz-om labourer eta d'an deiz en deuz miret evit-ha. Mar labourer eta

d'an deiz-se, eb red, e tizentom ouz-om C'hrouer hag e pecl'ham.

« An zizentedigez a zo eur pec'hed divalo ha kasuiz. Piou eo ar tad en ho touez, hag a ra plijadur d'eza kaout bugale dizent? — Beza oz peuz, neget-ta, lod ac'hannoc'h, bugale dizent? Doue hen permet e kenver an tadou pere na zentont ket ho-unan out-ha. Ha-ma! lavarit d'im-me, ha kalz plijadur a ra d'eo'h gwelet ho pugale o tizenti ouz-oc'h evel-se? Ha kontant braz e vec'h euz an ezo neuze, evel pa zentont ouz-oc'h? Eur merk ha ne vec'h ket re, eo ma savit ho mouez, ma c'hourdrouzit ha ma yit zoken beteg kemmer ho fouet gan ho pugale, pa ne fell ket d'ezo senti ouz-oc'h. Ha-ma! tadou, mar d-eo divalo d'ho pugale mankout da zenti ouz-oc'h, eo ken divalo ha muioc'h divalo d'eo'h c'hoaz mankout da zenti ouz Doue (Doue a zo brasoc'h eged an dud); mar ya droug enn-oc'h, pa zizent ho pugale ouz-oc'h, Doue ne ouffe ket kennebeud beza re gontant ac'hannoc'h, pa zizentit out-ha; hag evel d'oc'h, sevel a ra he vouez d'ho kourdrouz, klevit-se, c'hwi, labourer yen zül, hag en divez e teu d'ho skoi gan he voallennou. Gwelit ar goalleannou a gouez heb bloaz, du-ma, du-ont dre ar bed, war madou an douar. Petra eo en deuz ho zennet? Al labourou sül. »

II.

PEC'HED A LAERONSI.

« Lavaret a reenn d'eo'h, dissul all, e reom eur pec'hed a laeroni war an Aotrou Doue, o labourat da zül. An Aotrou Doue en deuz roet d'eom c'houec'h devez evid ober on labourou pemdezyeg, ha n'en deuz dalc'het gan-t-ha nemed ar zeizved devez. N'ed eo ket bet selluz ouz-om, c'hwi wel. Frank, er c'hontrol, en deuz digoret he zorn. Ia, c'houec'h devez leun en deuz roet d'eom! Ha n'en deuz dalc'het gan-t-ha nemed eunanig. Mes ar zeizved devez-se, klevit mad, Doue en deuz greet aneza evit-ha he-unan, evid he zervich, hag e fall d'eza a-grenn e lessem aneza gan-t-ha. Mar deom eta da labourat d'an deiz santel, e laerom an Aotrou Doue. Hogen, gouzout a rit petra a vez greet d'al laeron. Al laeron, pa c'heller ho anaout hag ho faka, na vent ket lezet da vale e touez an dud honest; dastumet e vept, kondaonet da bæa an amant, taolet er prizonyou, kaset d'ar galeou. Ha-ma! Doue a ra evel-se d'ar re a laer e zevez war-n-eza. — Da genta: ho anaout a ra oll mad, hag ini ebed na ell achapa euz a dre he zaouarn. — Ho c'hondaoni a ra da bæa an amant, o lemmel digant-ho madou ar bed-ma (biskoaz al labourer yen zül ne voent penvidig, da viana pell, na zoken tud mad ar bed gan-t-ho); ho zaoler a raio, goude ar vuez-ma, en he brizon, anvet an ifern, mar chomont aheurtet en ho fec'hed ha mar marvont enn-ha. — Beza ez euz iniennou hag a voar c'hoarzin, pa glevont komz euz an ifern. Mes, pa vifont kouezet enn-ha, ne c'hoarzeffont mui, a zonz d'in. Gwelet e vezo pe int pe Doue a vezo ar c'hreva. Doue en deuz lavaret ez euz eun ifern, hag eun ifern peini n'en devezo fin ebed, evid ar re a dorr

he c'hourc'hemennou, en eur feson grevuz, a gendalc'h da dorri anezo, pe eunan anezo, hag a varv en ho fec'hed. Ar re a ra ar pezh a zo red evid meritout an ifern hag o deuz aon evel-se da veza taôlet enn-ha, goude ho maro (lec'h o deuz da gaout aon), a lavar n'ez euz ini ebed. Gwelet e vezo, eun deiz, peini a vezo bet ar gaouyad, pe Doue, pe Paul ar skraber, pe Fanch al likaouer, peini a fell d'eza ne vez ifern ebed. »

Y.-K. KERZALE, *beleg ar Zalet.*

(*Eur pennad all eur wech all*)

BUEZ SANT SAMSON.

(KENTA PENNAD.)

Vad a ra d'eomp, nin etrezomp, tud a Vreiz-izel, clevout comz euz ar veleien hag an eskibien santel, a zo deut adreuz d'ar mor don, da zigas ar feiz en hor bro. Plijadur vraz a ra d'eomp en ho buez, hag ouспен-ze hor c'helon a gav magadurez ar vella en ho vertusioù. Setu perac em euz c'hoant da lacat hirio dirag daoulagat lennerien *Feiz ha Breiz*, buez unan euz ar vissionerrien santel-ze o deuz labourer ken calonec da blanta ar feiz etouez ar Vretoned. Ar missioner-ze, eo Sant Samson, caret hag enoret en hor bro.

Sant Samson, guinidic a Vro-Saos, en devoa evit tad ha mam Ammon hag Anna, anavezet ho daou dre ho furnez, ho santelez hag ho lignez huel. Meur a vloaz a ioa aboue m'edont demezet, eb m'en dije, en despet d'ho fedennou ha d'ho aluzennou, roet Doue d'ez-ho buguel ebet. Eun deiz cousgoude Doue a roaz da anaout, ez ea ho feden da veza selaouet. Er bloaz 480, Anna a lekeaz var an douar eur mab hag a voue galvet SAMSON, deiz he vadisiant. He guerent a reaz ar pezh a ioa en ho galloud evid rei abred d'ho c'hrouadur eun descadurez christen.

D'an oad a bemp bloaz, Samson, dre m'en doa eur spered lem, a ziskulliaz d'he dud ar c'hoand en doa da studia ar skianchou. Er penn kenta, he dad n'hen selaouaz ket, rag aoun he vab, eur vech deut da veza desket, a n'em raje relijiuz. Mez Doue en doa taôlet he zaoulagad var Samson, hag a zougas he dad da rei d'ar c'hrouadur he c'houlén. Casset he voue eta da gaout Sant Ilut, a ioa e penn eun abati caer ha brudet meurbet dre ar vro. An abat santel, o veza anavezet en eun taol crenn ene caer ar c'hrouadur-ze hen diguemeraz gand levezet.

Samson a jomaz epad dec vloaz dindan kelennadurez Sant Ilut. Epad an amzer-ze e tescaz kement a draou, ma c'hellet he lacat e touez an dud muia desket, petra bennag n'hen doa c'hoaz nemed pemzec vloaz.

Kement-man ne dle lacat den da veza souezet; rag Samson a dremene kement a amzer er beden evel er studi; ha dre eur sclerijen a deue d'ez-han euz an env, e teske muioù e hars he grucifi eghet e scrijon an dud a zescadurez vraz. Eun deiz o veza couezet var eun dra diez braz da gompren, e redaz feillen goude

feillen he holl levriou evit guellout e anaout; mez ar sclerijen na deue ket. Mont a ra da guemer kuzul digand Ilut, he vestr. Ilut n'he c'homprene ket kenebeud. Mez Samson evit-se ne baouezaz ket da glask ar pezh en doa c'hoant da gaout. Goulen a ra digand an env ar pezh a nac'h outhan an douar. E n'em rei a ra d'ar beden goaz eghet biscoaz, creski a ra he iuniou, lacat a ra an disiplin da vont en dro, hag en drede nosvez, epad m'edo en orezon, eur sclerijen ar gaera a deuz da bara en he gambr. Neuze e clevaz eur vouez hag a lavare : « Doue en euz sellaoet ho peden; ez-it breman « da gompren an dra diez ne gomprenec'h ket; hag ouس-« pen-ze iviziken, n'euz fors petra a c'houlénfet euz an « env, a vezo roet d'heoc'h. »

Eun deiz, etre m'edo c'hoaz scolaer, ec'h erruaz da Sant Samson mont gand ar scolaerrien-all euz he oad, da c'houlénfet eur parcat ed. A veac'h edont crok en ho labour a zevri, pa zibouchaz eun aer viber euz an douar hag ez eaz dindan dillad unan euz ar scolerrien en eur zont d'hen flemma ebars en he c'har. Ar c'har gouliet a deuz da guenzi kement, ma ne voa mar ebet e rankje prest mervel ar paour kez scolaer iaouanc. Samson a guemeraz truez outhan. Dont a reaz da sonj d'ez-han er bromessa a reaz d'ez-han ar vouez a glevaz en he gambr. E n'em lacat a ra er beden, ha neuze, en eur zont da scullia oleo-sacr ha dour-beniguet var ar gouli, e laca ar c'har clanv da ziguenzi en eun taol cren.

Eur vech-all eur vandennad fraoed a ziskennaz var eur parcat ed nevez gounezet hag a denne pissa ma c'hellent euz an douar ar greun. Sant Gildas, aboue laket da abet e Sant-Ruyer, ha Sant Paul, bet escop e Castel, o devoa great ho goalc'h evit pellât al laboused-ze euz ar park nevez gounezet. Mez ar pezh n'heljont ober en eveleb guiz, Samson her greaz gand eur gomz ebken. Divezatoc'h, deut da veza escop e Dol, e pelleaz euz ar vro eur maread laboussed all a gollé an douarou gand ho bek ha gand ho scrabadennou; ouспен ne lezent den da gousket gand ar garnach a rent. Ar venec'h en ho c'houlénfet o devoa ive mil boan o pedi hag o cana ho ofison gand an drouz a glevant.

P'an devoa peure'hreat he studi, he dad a falvezaz ganthân digas Samson d'ar ghear evit caont diganthen eur sicour benag etre ma chomje var an douar, ha dreist oll evit caout en-han eun arp en he gosni. Mes an den iaouanc a bedaz ken caer he dad d'hen lezel da vont da relijiuz, ma teuz Ammon en doa sonj er pezh en doa lavaret d'ez-han an eal da rei he c'houlénfet d'he vap, rag aon da vont a eneb bolontez Doue. Beuzet he galon a levezet, Samson a ia en eur dridal da gaout an tad Ilut, evit hen pedi da rei d'ez-han ar guiskamant a rilijiuz. Ilut ne voa ket bianoc'h he joa. Ober a ra var an heur chench guiscamant da Samson hag en doare diaveaz nevez-ze, e cas anez-han dirag an holl venec'h-all euz ar gouent. Ar re-man euz he velet a deuz ive da stracal ho daouarn gand ho joa, en eur trugarecat Doue da veza digasset eun den ken santel en ho mesk. Evit Samson, hen, a veac'h en doa kemeret guiscamant evr manac'h,

a deuz da ankounac'hât kement en doa caret er bed pa edo, evit peintia he spered hag he galon gand ar c'haera vertusioù. Dre ma creské ato he akét da bedi, e teuz, e ber amzer da dremen a galz er santelez, an holl venec'h euz he gouent. Ar vuez a rene ne voa nemed eur beden hag a bade ato. Ar penn brassa euz an noz a lake da bedi; ha var an deiz pa gave eur pennad dibreder benag, e lake an amzer-ze da studia ar scritur sacr ha da zeski traou-all talvoudec d'ez-han ha d'ar venec'h-oll euz an abatti. Ar binijennou braz a rea a zo en tu-all da guement a c'helleur lavaret. Debrî a ré nebeud, ha c'hoaz ne gassé morse d'he c'hinou na kik na pesked. He iuniou a ioa ken braz, ma chomme aliez eur sizun pen-da-ben eb debi tam. Epad ar c'hoareiz hed-a-hed, ne rea nemed tri pe bevar bred, da lavaret eo, peadra ebken evit chom beo. Evit goele n'en deoa nemed an douar caled, ha c'hoaz avechou e couske euz he sao, arp he scoaz euz ar voguer. Mez euz an oll vertusioù, ar burentez eo an hini a garrie ar muia, hag hi eo ive ar vertuz e deuz ar muia ornet he spered hag he gorf. Setu perac evit divoal na deuje netra da lacat tenvalijen ar c'hic en he galon, ne jomme morse da gozeal gand ar merc'hed, nemed eun-all benag a vije ganthan.

BODEUR.

(*Eur pennad all eur vech all.*)

Perac ar Vretonet n'int ket kenta pobl a zo var an douar.

Eun aotrou a Vreiz-izel, an Aotrou Ian he hano, den a skiant ha cristen mad, a ioa eat da jom da Paris. Eno en devoa kemeret evit mevel eur galouper-ruioù euz a ghear, paotr a spered hag a ijinn, lemm he lagad ha lampr hé deod; he deod zoken a ioa eun tammic flemmuz aveichou: gant an dra-ze coulscoude ne vanke nag a galoun nag a volonte vad. He vestr en devoa he les-hanvet *Coll-Bara*, evit gouzout hag hen a c'houlénfet farsal divar he goust; mes ar paotr ne rea van ebet euz a ghementse: ar pezh a ziscoueze selear n'oa ket eur penn fall a zen. Mes he deod avad a iea ato en dro...

Eur pennad a ioa m'edo gant an Aotrou Ian, pa gomzas evel-hen ouz he vestr, eun deiz a oue:

Me gav drol, Aotrou, aboue an amzer m'emaoun en ho ti, n'en euz biscoaz ho cuelet *gaë*.

— Penaoz *gaë*? eme an Aotrou; ne zouch ket d'inn ive da vilhana az peffe va guelet aliez tenval va fenn.

— N'e ket an dra-ze eo, Aotrou; me fell d'inn lavaret n'em euz biscoaz remerket e vije crog ar bic en ho scouarn, e vije eur banné a re a zindan ho fri.

— Petra! *Coll-Bara*, daoust ha te az peuz avi ouz ar re a vez er stat-se?

— Me? n'em euz ket avad. Lavaret a ran ebken ouz souezet ganeoc'h e kenver ar poënt-se.

— Ken assur? Souezet oud abalamour n'am gueles ket en eur stat e pehini kaz hon amezeghez goz en deffe mez oc'h en em gaout! Lavar d'inn-ta neuze perac oud souezet a ghement-se.

— Perac? Abalamour zur ma'z oc'h Bretoun. Me'm euz clevet ar Vretonet a zo everien fall a zour, hag en em garg evel barazou pa gavont guin pe *odevi* da eva.

— Guir eo ez euz en ho zouez hag a zo diod aoualc'h evit en em garga evelse. Mes a drugare Doue ez euz c'hoaz eleiz anezho ha n'o deuz ket a c'hoant da ziskan e rene ar moc'h. Evidon-me, *Coll-Bara*, a esper ne gouezinn morse ken izel.

— Guir eo n'e ket eun dra gaër da velet eun den mezo: braoc'h eo guelet eun anéval. Mes eb beza mezo-dall pe mezo-penn-moc'h, e c'heller beza abafet pe badaouet, beza etre daou, etre mezo ha divezo, beza, en eur gher, gaëoc'h eghet ar c'hustum. Drolla tra eo an dra-ze, Aotrou Ian!

— A gav d'id, *Coll-Bara*? evidon-me ne gavan ket an dra-ze drol tamm ebet: Mar d'eo eun dra euzuz beza mezo collet, ez eo ive da vilhana eun dra divalo aoualc'h beza anter-vezo.

— Mes an dud-se, Aotrou Ian, a ra traou ker farsus! hag ar pezh a leveront-ta!... Ne ouffe den miret da c'hoarzin oc'h ho guelet hag oc'h ho c'hlevet: pe a dra zo da freuza ar bouzellou.

— Da lavaret eo, *Coll-Bara*, an dud-se anter-vezo n'int deuet c'hoaz da veza loañet nemet var anter, hag ebars er stat-se e c'hoariont ar *gomeidi* dirac ar ré all, er memes tra evel ma raffe marmousien-pe chass desket da ober a bep seurt c'hoariellerez.

— Petra fell d'ehoc'h, Aotrou Ian! Ma n'int ket evit ho zech?

— Ne c'houloud ket petra leverez, *Coll-Bara*. En em lakaat er stat-se a zo ato eun dra ha n'e ket din euz a eun den hag en deuz respet evit-han he unan, hag an nep piou bennac n'e ket goest d'en em ren he unan n'e ket eun den eo. Ma ve hostalirioù evit al loañet, e ve red lakaat eur c'helc'h houarn var ho fri d'ar re a ve guelet o tont ac'hano, hag hen starda muia ma ve ghellet var ho ghinou, evit miret outho da greghi. Evelse ive e ve mad aliez huala an dud a ve guelet o tont anter-vezo euz an hostaliri. Ne ket ar re o deuz collet var neat ho skiant vad dre an evach eo a ra ar muia drouc; ar re ne d'int nemet abafet pe badaouet, nemet anter-vezo, eo ar re c'hoassa aveichou. An oll dorfejou, couls lavaret, an oll draou countrol da lezennou ar vro pe da lezennou Doue, a vez great gant tud hag a zo savet ar guin pe an *odevi* d'ho fenn. Dibaot a veich e ve great eun taol fall bennac eb m'en deffe ar guin pe an *odevi* eur perz bennac en taol-se.

— Ah! Aotrou Ian, beza ez euz ive tud hag a zo direiz ha dibenn meurbet divar ar guin pe an *odevi*.

— Ar guin ne d'eo mad nemet pa ne vez ket evet re anezhan, ha pa na deuffe ket eun den da veza direiz ha dibenn goude beza evet, kement-se ne vir ket n'en deuz lakeat en he gof ar pezh a ioa marteze, red dezhan da gaout evit maga he c'hreg hag he vugale. Clevet a reer bemdez tud oc'h en em glemm dre m'az eo bihan ho gounideghez ha tenn ho labour; hag an dud-se ne zonzont ket penaoz, oc'h en em rei da eva, e

viharaont ho gounideghez euz an anter, hag e-lakeont ho labour da veza an anter poaniussoc'h evitho. Nag a zimiziu a zo deuet da veza rezeudic dre ar vesventi. Nag a vugale ghez a den da ghemeret techou fall o redet ar ruïou; nag a re all a jom epad ho buez eb-gouzout netra, nag a re all c'hoaz a deu da goueza elanv pe da veza mac'haniet dre eur goal darvoud bennac; nag a re all erfin a deu abred d'en em goll dre ar vezventi: perac? Abalamour ho-zad, e leac'h espern he amzer, he arc'hant hag he skiant vad, evit tenler evez anezho, evit lakaat ho scolia, evit rei dezho aliou mad, ne zesc dezho, er c'hontrol, dre ar scouer euz ar vuez fall a ren, nemet beza bugale direiz ha libertin, hag ho lez en ho roll da redet ar ruïou evel chass distag pere n'o deuz mestr ebef. Eun tad, eun ozac'h, hag a vez aliez tomeat dezhan dre ar guin pe an *odevi*, ha pa na ve ket drouc ha dibenn goude beza evet, ne ket eun den eo: ne hell beza nag eun tad mad nag eur pried mad.

— Me zo sur, Aotrou *Ian*, eo gant ar merc'het o peuz clevet an dra-ze, abalamour ar merc'het o deuz aoun rac fest ar gheuneuden.

— Ne ket souez o deffe aoun: ne anavezan den hag a ve red dezhan caont *devotion* evit an taoliou-baz hag an taoliou troad balaën. N'e ket gant ar merc'het ken nebeut na gant ar goazet eo am euz clevet ar peuz am euz lavaret bremaic: ar skiant vad ebken eo en desz en desket d'inn. An Aotrou Doue n'en deuz ket crouët ar merc'het evit beza bazatet gant goazet mezo, hag an nep en deuz nebeut aoualc'h a respet evit-han he unan evit en em vezvi, n'en deuz mui guir da netra nemet da veza taghet gant he ghi.

— Couls goude, Aotrou *Ian*, beza' zeuz ive merc'het hag a zo pennou ker fall!... Ar goazet a lavar n'e ket possubl beva gantho, ha neuze, evit pellaat dioc'h an trouz hag ar scandal, ez eont d'an hostaliri da ziverra ho amzer eun tammic gant ho mignounet.

— Selaou, *Coll-Bara*, ne lavaran ket e ve an oll merc'het henvel ouz Elez; couls goude ma vije nebeutoc'h a c'hoazet mezvieren, e vije ive marteze nebeutoc'h a verc'het henvel ouz diaoulezet. Pa ghemerer eur stat a vuez bennac, renker ive gouzanv an inouaman-chou hag an diezaman-chou all euz ar stat-se, evel ma tanveer ar plijadurioù hag ar joaïou a zo enhan. Ar goazet o deffe muioc'h a batantet mac'h evfent eur picherad dour fresc e plas peb chopinad *odevi* a lounkont, ha peguen inouüs bennac ma c'hell beza coumpagnunez ho graguez, ar goumpagnunez-se a ve c'hoaz guelloc'h evitho egnat an hini a gavont en hostaliri.

— Mes, Aotrou, en hostaliri eo e caver tud hag a c'hoar beva, ha beva mad, ato laouen ha dizoursi...

— En hostaliri tud hag a c'hoar beva! ia, tud ha ne c'houzont ket beva-ta, pe tud hag a vev fall, mar d'eo guell ganes. Kea da velet-ta, *Coll-Bara* peseurt loanet a gavi eno. Traou diskempenn, leun a vastaren, goloët a c'blaouren, flear ar guin hag an *odevi* gantho varned diou pe deir leo round; an ti hag al leur-ghear

a zo e kichen o tregami gant an trouz a reont, gant ar ioc'hadennou a laoskont; nemet comzou-louz ha leoudouet scrijaz o tont euz ho ghinour; lod oc'h en em fougheal euz ho c'ho vadou tremenet; lod all oc'h en em glevet evit ober c'hoaz goassoc'h en amzer da zont, hag an dra-ze a zo gouzout beva a zont d'id? Oh! nan, n'e ket sur avad, *Coll-Bara*: an dra-ze n'e ken nemet implija ar vuez falla ma ouffet ober. Ma ve eur c'hiic bihan bennac en hostaliri-ze, ha ma teuffe dezhan eun tammic skiant evit eur pennadic ebken, ar c'hiic-se a velle dioc'h-tu eo hen ar furra, a-gals, euz ar goumpagnunez a zo en dro dezhan.

GABRIEL MORVAN,

Person Plugüen.

(Eur pennad all eur wech all).

YANNIC A VIL VICHER

PE KENTELEIOU VAR CALS TRAOU HAG A VE MAD DA C'HOUD.

I.

Petra eo Yannic a vil vicher?

Yannic a vil vicher a varvaz gant an naon, a lavar ar re goz. Ia guechiall; mæz, hirio, Yannic a vil vicher zo eur Mondian. Ne fell ket d'inn rimadella deoc'h he vuez penn da benn; kement-se a ve re hir. Anzer zo bet evit lavaret an disterra tra, e kemeret calz tro, mæz abaoue ma ze deut ann henchou houarn, n'eus ket amzer d'a zale, hag e troc'her calz berroc'h. Ne lavarin ket deoc'h ken nebeut e pelleac'h eo ganet ha d'euz pe seurt lignez eo. Hag eon zo ganet e Leon pe e Kerne, e kær pe var ar mæz; hag eon en doa evit tad eur glazic pe eur rouzie, eur penguennec pe eur paganad, eun torrer pennou touseged pe eur boure'his toc moull hir, petra ra ann dra-ze deoc'h? Ma o peffe re a c'hoant d'a c'hout kement-man, goulennit hag e vo lavaret deoc'h.

Ar peuz a ouzon, hag a fell dinn a voese ar re all, eo Yannic a ioa eun den a zoare, eur potr a speret hag a calz a zescadurez. Diez braz e ve dinn lavaret ped micher en d'euz bet. Va unan em beuz clevet anezhan o lavaret ez eo bet labourer douar, den a vor, souldard, mevel e ty eur midicin, etc., etc. Hirio, Yannic a vev d'eus he levé hag a zo ebad he zoare.

Calz tud, caër o deus digeri ho ginou, ne dapont morse netra; caër o deus guelet, clevet, redet bro, atao e chomont ezenn. Yannic, en distro d'euz he vil vicher, zo deut gantho eur c'ho vad-reud a zescadurez, hag eur yalc'had vad a arc'hant. Den ne gar guell an doare da labourat an douar, da gas eun tiegéz en dro, da brena, da verza. Gout a ra mad d'eus a bep seurt clenvejou; ober a oar a bep seurt louzeyer; diluya a rayo deoc'h eun affer couls a meur-a-zen a lezen, ha lavaret a rei deoc'h petra eo an eol, ar steret ha kement tra a velomp en dro deomp.

Me a anavez calz tud desket mad, mæz an dud-se a zalc'h gantho ar peuz a ouzont. Yannic ne c'houlent ket guell evit ober vad gant he zescadurez, deski d'ar re all ar peuz a oar he unan.

Evel-se e touer a bep-tu d'he gaout; anavezet eo dec leo tro var dro. Daouzec vloas-se emañ o chom e kichen he dy hag ec'h hellan lavaret gant gouirionez ne dremen devez ebef, couls lavaret, na vez unan bennac oc'h he gaout. Va unan, bevech m'am beuz c'hoant da gaout eur c'huzul n'eus forz var betra, ec'h ouzon da gaout piou mont, hag ar peuz a lavar a raan, ha morse n'am beuz bet kez.

Ar peuz en d'euz graet vad d'im-me a gredan a helpe ober vad da veur a bini all. Evel-se em beus sonjet deski d'ar re all ar peuz zo bet desket d'inn va unan. Hag evit ma c'hell muioc'h a dud clevet ac'hanon, lacaat var *Feiz ha Breiz* ar peuz am beus clevet.

Calz a rai goab ac'hanon, marteze ar re ne ouzont netra da genta; mæz calz all, ha dreist holl an dud divar ar mæz a lavaro bennos-Doue d'inn. An Otrou Doue, d'a vihana oa lenn e goelet ar c'halonou, hag a oar ac'glasean nemet ober vad d'am nesa, en do sonj ac'hanon.

A viziken eta, ar re a lenn *Feiz ha Breiz* o do eur wech ann amzer, eur gentel digant Yannic a vil vicher, skrivet gant he amezec Yvonic ar Babiller.

Mar gallan den na vo mouet oc'h he glevet. Unan bennac a c'hoarzo, ha calz a zesco gantho traou mad ha traou caër.

KENTEL GENTA.

Ann doare d'a brederi eun den claan.

I.

Ar guele. — Penaos hag e pelleac'h e tlee beza.

Setu ni er goan, amzer ar glaoeyer, ar goal avelou, ar scorn hag ann erc'h. Er goan dreist-holl eo brao beza en eur guele mad pe e corn an oaled e kichen eun tantad mad a daan. Mæz ne ket peurvuya ebad lacaat ar fri er mæz, ne vezer ket pell evit beza tizet gant ar c'blenvel. Evel-ze ive er goan eo e vez peur liesa ar muya tud claan.

Ne ket dudius beza claan: goulennit digant ar re zo bet. A c'hoaz er c'hæriou da vihana, ann den claan ne fâ netra dezhan. Ar midicin zo e toull he zor; tyez so evit en digemer m'ar de paour, ha m'ar de pinvidic e cavo en he dy unan bennac hag a vouezo tol evez anezhan. Mez, var ar mæz, aliez n'euz netra d'euz an traou-ze. Ar midicin zo pell ha ne deu ket evit bennos-Doue. En ty ne d'euz den aliez hag a vouese ober eur banne tizan, farda eur palastr, lacaat goaderezet, etc.

Me gav dinn eta ne ve ket eun dra fall deski d'ann dud divar ar mæz tol evez d'euz eun den claan, ober ar peuz a lavar ar midicin. C'hoant o peuz eta, va mignon, d'a zeski ober eur banne tizan, eur palastr ha cals traou all c'hoaz var dro ar re glaan, silaouit Yannic a vil vicher.

Eur mintinvez e coezas va zad claan, claan braz zoken. Ha me cas da glask ar midicin. Diou heur goude e oa ar midicin o tont en ty. Goude beza sellet oc'h he deot, goasket var he vrec'h, ha roet dezhan eun tol lagad, e

lavaras: choui a royo d'he tad tizan divar an drama, en eur lacat var an dol daou zornad traou, hag een kuit pell a oa. Ha nin, o sellet an eil ouz egile: — Te oar ober tizan ha palastrou? — N'houn ket, ha te? — Ken nebeut. — Oh! me a anavez unan hag a oar, ha me da redet da dy Yannic, mar gouien.

Sell Yvonic, eme Yannic ker laouen ha tra, petra zo anavez ganeez? Goall denval e cavan ac'hanout.

— Va zad so claan.

— Goall claan?

— Ar midicin zo o vont euit a zuman.

— Ac'hanta! petra an deus lavaret?

— Cals muioc'h a draou evit na ouzon me d'ober.

Ha me lavaret dezhan penaos e oa va zad ha petra eun doa goude hemennet ar midicin d'ober.

Neuze e lavaras d'inn:

— Azez a ze: guelet a raan dioc'h a leverez; en deuz d'a dad evit pell amzer; a c'hoaz e vo ret tol evez mad anezhan. Silaou ac'hanon ha dalc'h sonj mad:

E pelleac'h ema d'a dad?

— Er gegin, er guele cloz zo dres dirag ar prenest guer braz.

— N'hor ket evit er losker eno.

— Peraac? Eno ema brao dreist.

— Ne ouffé ket beza en nep leac'h falloc'h: eun den claan, evel a ouzot, ne gar ket ann trouz, ne gar ket guelet dirazhan tud o scandalat oc'h en em egazi.

— Credi avoallac'h a raffen, rac va zad a vez atao o lavaret: roit peoc'h ta, c'houi zo eun torr penn.

— Ha gouscoude evel a ouzot, er gegin e vez ar muya trouz. Eno eo e vez ar vugale o c'hoari; eno eo e vezer o preja, eno e vez atao unan bennac o tont pe o vont.

— Gouir a livirit.

— Eun den claan pa vez eet ne vez mui evit flach anezhan he unan, a rank ar re all hen-trei hag en distrei, er sevel en he goazez, chench dezhan, penaos ober ann dra-ze en eur guele cloz!

— Diez braz eo.

— Ouspenn ze, eun den claan ne gar ket peurvuya ar sclerijen. Ar c'blenvel a laca ann daoulagad d'a zont da veza tener ha n'int ket mui evit gouzaon eur sclerijen ecren.

— Evelse, va zad avez atao tro oc'h ar voger, ha pa vez tro oc'h ar prenest, e vez atao serret he zaoulagad gantho; ar goulou zoken a ra poan dezhan.

— Ne peuz nemet gueleou cloz en da dy?

— Eo avad, a drugare Doue: er solier hag er penn d'an traou deuz an ty, e z'euz eur guele gis kær, dantelez caër varnezhan ha rodou keor dindannhan.

— Kerz d'ar guer, cas d'a dad dii, ha goude te denyo adarre d'am c'haout.

YVONIC AR BABILLER.

(Eur pennad all eur wech all)

Hano ar Zent evit ar Sizun-ma.

- DILLUN, 4 C'HUEVRER. — Sant Andre Corsin, escop.
- DIMEURS 5. — Santez Agatha, guerc'hez ha merzerez.
- DIMERC'HER 6. — Sant Gildas, abat.
- DIZIQU 7. — Sant Romuald, abat.
- DIRGUENER 8. — Sant Ian Matha.
- DISSADORN 9. — Sant Tit, escop.
- DISSUL 10. — Pempet sul goude ar Rouanez. Santez Scolastic, guerc'hez.

An Abostol hirio :

Va breudeur, an hini en em c'hlorifi, ra en em c'hlorifio e Doue. Rag ne ket an hini en em veul he unan eo so din da veza meulet, mes an hini so meulet gant Doue. Plijet gant Doue e c'houzañfac'h ac'hanon da gomz evel eun den diskiant pa gomzan ouzoc'h. Rag goarisi am eus ac'hanoc'h evit Doue; dre ma em eus ho temezet d'an hini epken a so ho pried, me lavar da Jesus-Christ.

Eil lizer Sant Paul d'ar bopl a Gorinth. x hag xi.

KELIER.

E Frans eo bet niveret an dud er bloas tremenet. Ervez an niver so cavet, ez eus brema enhi eis milion ha tregont, seis mil ha triuguent, nao c'hant pevarzeg ha triuguent den. Er Finister ez eus c'huec'h cant daou ha triuguent mil, pevar c'hant pemp varnuguent den. Ne deus e Frans nemet c'huec'h departamant hag a ve muioc'h a dud enho evit er Finister.

Er sizun dreanenet eo eat adarre an ed var gueraat. Ar penn abeg a guementse eo ma edo an amzer oc'h enebi ha ma zeus bet digasset nebeut a ed d'ar marc'hajou.

Ervez ar c'hazetennou, e meur a garter e Frans, eo bet c'hoas cals teoc'h an erc'h evit er vro-ma. E leac'h-iennoù e voa daou droatad erc'h hag ouспен. Toennou so gullet o crevi dindan ho beac'h. E carteriou e voa aoun na vije beuzet an douarou gant an dour pa deuje an erc'h da deuzi.

Epad ar scorn so bet en derveziou tremenet, ez eus digouezet eun darvoud braz e Londrez. Eur vanden dud a bep oad hag a bep reng a voa o pourmen var ar scorn. Ar scorn so deut da derri, hag ouспен daou c'hant den, a leverer, so coezet pe strinket en dour. Evel ma zoa tud aleis a dost, ez eus gallet savetei cals anezho. Benzet ez eus gouscoude eun antercant den bennag.

AMEN. — En eur bourkig bihan, hanvet Marseil, ez eus bet eur gouel caer an eil devez a vis guenver. Ar gouel-ze a rer bep bloaz hag a so hanvet gouel an *Hostiou santel*: Setu ama a belec'h e teu ar gouel-ze.

Er bloas 1532, epad gouelioù Nedelec, en iliz Marseil,

e voue laeret ar ciboar santel e creiz an noz. Ar ciboar-ze a voa en arc'hant alaouret, hag a voa meur a hosti consacret enha. Al laeron a lakeaz an hostiou e voal ar ciboar, hag ho zaolas en eur voden tost d'an iliz.

Eis dez goude, eun den o tremen dre eno, a voue souezet o velet eun dachennig dizolo, epad ma zoa e leac'h all eur guiscat mad a erc'h var an douar. Tostat a reaz, hag e velas voal ar ciboar santel hag an hostiou sacret en he douez. Doue en doa gourc'hemennet d'an erc'h respeti al leac'h-ze ma edo ar zacramant taolet gant al laeron.

An den-ze a ieas ractal da ziscleria kementse da ber-son ar barrez. Hema a deuas da guerc'hat an hostiou, hag ar bobl pehini a voa en em zestumet oll, hen heuillas gant ar brassa respet beleg an iliz eleac'h m'ho c'hassas. Goude e voue savet eur groaz eleac'h m'oa bet corf hor Zalver, hag e voue great eur hars tro var dro d'an dachennig-ze, evit miret na valeje den var an tam douar-ze bet touchet gant corf Jesus-Christ.

An dud o devoue a neuze eun devotion vraz evit al leac'h santel-ze, ha cals burzudou a zigoezaz eno; meur a zen clan a gavaz eno ar iec'het. Divezatoc'h e voue savet eur chapel eno, hag an hostiou santel a voue laketa enhi. Er bloaz 1568, tud hag o doa dinac'het ho relijion a gassas eur belec dinac'her pe touer da lonca an hostiou-ze. Hen ober a reas, mes kerkent e teuaz he oll izili da veza seizet, hag e varvas nebeut goude. Abalamour da guementse eo bet ofreet da iliz Marseil ober eur gouel d'ar sacramant an eil a vis guenver, ha setu ar pez so bet great er bloa-ma gant solanite vras.

Ervez ar brizacherien, an dour beuz a ioa bet bre-ma ez eus eur pennad en doa great distruch e 31 departamant. Seiteg cant ha diou barrez o deus bet calz pe nebeut a zrong. Ar c'holl a ia da ouспен tri milion ha daou-uguent. Var dro pemp milion so savet dre ar c'hestou so great evit an dud reuzeudig-ze. Kementse a zo pell da zonzal lamet an dienez divar guement all a dud a bere cals so lakeat var an douar noas. G. M.

PRIZ AN ED.

KEMPER. — 26 Guenver.		PONT'NABAT — 24 Guenver.	
Priz ar c'hant liour.		Priz ar c'hant liour.	
Guinis	46 lur, 32 c.	Guinis	46 lur, 36 c.
Segal	9 lur, 86 c.	Segal	44 lur, 43 c.
Eiz	40 lur, 03 c.	Eiz	40 lur, 63 c.
Ed-du	7 lur, 60 c.	Ed-du	8 lur, 43 c.
Kerc'h	40 lur, 42 c.	Kerc'h	40 lur, 63 c.
Avalou-douar	4 lur, 00 c.	Avalou-douar	3 lur, 75 c.

Ar Gerant: AR. DE KERANGAL.

Kemper, moulet gant AR. DE KERANGAL, Moulur an Escopit.

FEIZ HA BREIZ,

KELOU A BEP BRO, HA KENTELIOU VAR BEP TRA,

DIGASSET BEP SUL

Da guement Christen a goms ar brezouneec.

Eun Abonnemant d'ar Gazeten a goust :

- Evit eur bloas DAOU SCOUET.
- Evit c'huec'h miz EUR SCOUET.
- Evit tri miz C'HUEC'H REAL.
- Eur gazeten ebken DAOU VENNEG.

Ar baemant a dle beza great araog caout ar gazeten.

ALIOU.

Ar scrijou a ve c'hoant da lacat er gazeten a dleer da adressi oll d'an Autrou MORVAN, Beleg e Kemper.

Ar paeamanchou a dleer da adressi d'an Aotrou SALAUN, ebken. An abonamant a guemerer e ti an Aotrou SALAUN, librer, ru Kereon, e Kemper.

KEMPER, 9 C'huevrer 1867.

Avechou an dud difeiz, ep relijion, en em gaf da lavaret ar virionez en despet d'ezho. En derveziou tremenet, unan eus an dud-ze, o sonjal penauz ez a brema ar bed, a lavare : « Peleac'h e tigouezimp-ni ma talc'homp da vont evelen ? Den ne gaf dez an traou buan avoalc'h. An oll o deus c'hoant da grial : Buanoc'h c'hoas ! buanoc'h c'hoas ! Cridi a elfet e ve an oll crog an derzien enho, pe zoken e vent oll en alter. » Guir a lavare an den-ze: Hirio ne gaver morse ez afet buan avoalc'h e nep tra. Ar c'hirri tan, evitho da vont evel an avel, ne deont ket buan avoalc'h dioc'h meno ar veachourien — Pet leo bep heur a ra ar c'har tan-ma ? — Deg, daouzeg, pempzeg leo. — Ne ra ken ? Bah ! noz e vezo pa zigouezimp e Paris ! Guech all e voa red pevar pe hamp dervez evit ober ar memes pennad hent, ha c'hoaz e cavet ez eat bete re vuan.

An telegraf electric zoken ne da ket buan avoalc'h. Setu ama unan hag a zo o c'hortoz eur c'helou eus an Americ, eus ar penn pella ar bed. Eun heur zo en deuz scrifet, ha n'en deus ket bet c'hoaz a respont. Guelit-hen penauz e tigor he c'hinou ker scuiz ha ken enouet eo ! Guelit pebez camejou hir a ra ! Eun heur o c'hortoz eur c'helou ! Guechall en divije bet eur bloas da c'hortos. Mes hirio ! eun heur ! Peadra so da goll ar penn.

Hirio an den iaouane, ar c'hrenn botr o sevel divar skigner ar skol, divar ar skigner-ze en deus sicouret da doma epad eur bloavez bennag, a fell d'ezhan beza dioc'htu eur goas mad, eun aotrou bras. Caout a fell d'ezhan dioc'htu carroz dindanha, hag arc'hant etre he zaouarn, ne ket a gant scoejou, mes a vil scoejou pe a vilionou. Ha caout a ranc e guis pe c'his, a dreus pe a hed, a gleis pe a ziou. Guechall eun den a gave dezhan e veze mad ar bed gantha pa elle, goude beza bet epad meur a vloaz aketus da boania, da labourat, caout var fin he amzer eun tam peadra etre he zaouarn, ha tremen en he aez he vloaveziou diveza. Hoguen it da gomz a gue-

mentse da eun den iaouane hirio. Ma ne ket eun truez, a lavarfe hen; petra ! e fell-deoc'h em befe peadra eun dervez bennag pa na vouezin mui an doare d'ho dispign, em befe madou pa vezo eat tenval va daoulagad ne allin ket ho gullet, pa n'am bezo mui a zent evit ho dibri ! Me ranc caout peadra dioc'htu cousto pe gousto, buan, buan !

Kinniguit da eur zoudart da vont d'ar vrezel eur benvec, eur fuzil mar kirit, gant pehini ec'h alfe en em zifet, ha losker eun tenn bep diou pe deir minuten. Ober a rafe goap ac'hanoc'h. Petra, eun tenn epken, eun enebour discaret bep diou pe deir minuten ! Red eo da viana ec'h alfe losker eun ugent pe dregont tenn bep minuten, ha discar eur c'hant den bennag epad ma vezo eur zoudart coz guechall o carga he fuzil. Petra div heur so eo digor an tau ha ne deus nemet antercant mil den discaret ! Daou zervez so eo digor ar vrezel ha n'eus c'hoas distrujet nemet eun tamig bro ha ne ket brasoc'h evit Breiz-Izel ! Red eo da viana e ve gallet discar antercant mil den bep minuten, ha distruja eur vro kement hag ar Frans bep div heur. Anez ne rafet nemet c'hoari. Ne ouzon ket c'hoaz hag e a ve contant ar zoudart a guementse. Lavaret a rai c'hoas marteze : buanoc'h ! buanoc'h !

O velet-se, ha n'eus ket a leac'h da lavaret evel ar scrifagner ma comzemp anezhan bremaic : Ma kendalc'homp da vont evelse, buanoc'h buana, , peleac'h e tigouezimp-ni ?

Ar vugale zoken ne gaf ket dezho ez afe an traou buan avoalc'h. Eur potr deut da zaouzeg pe drizeg vloaz a gaf dezhan eo deut ar mare evithan da veza den ha goaz avoalc'h, ep m'en defe mui izom a guentelioù re all. Eur plac'h dreist oll, deut d'an oad-ze, a ve sae ganthi beza kemeret evit eur verc'hig. A neuze e caf dezhi e tle beza plac'h avoalc'h, ha marteze zoken e cavo dezhi eo dlet a neuze d'he zud he respeti hag he zervicha, evel unan a behini e comz ar c'hazetennou er sizun-ma. En eur gear a Frans e velet, unan eus ar sulveziou

diveza, dissul ar rouanez, a zonc'h din, eur plac'h iaouanc o vont d'an iliz, fichet caer, guisket evel eur brinsez, aour ha perlez o stirlincat var he zro. Bale a rea gobinuz; an douar en doa beac'h oc'h he douguen. Troad oc'h troad ganthi ez ea en eur chilgamat eur vaouez deut var an oad, guisket dister, eun dorchenig plun ganthi dindan he c'hazel. Digouezet en iliz, en eul leac'h ma c'hellet eaz he guelel, an demezel a jom a za, hag ar vaouez coz a ia buan da guere hat eur gador dezhi ha da lacat an dorchen plun dezhi evit ma e'halje daoulina. Neuze an demezel a reaz eus sell rog oc'h ar vaouez coz, evit gourc'hemen dezhi en em denna diouthi. Piou oa an diou-ze? Eun demezel a reng' huel bennag hag he matez, a leverot-hu. Nan, lenner, an diou-ze oa ar verc'h hag ar vam, hag ho diou eus eur reng dister avoalc'h.

Guec'h all eo ar verc'h a zerviche ar vam. Ervez lezen Doue zoken e'lie ar c'hiz beza ato evelse. Mes hirio ez eus kement a speret etouez an dud, ar speret-se a deu dezho ken abred, ma o deus troet an traou-ze oll var an tu a enep. Ne gaf ket din e ve guelel aliez e Breiz-Izel ar vam o touguen torchen d'an iliz da lacat dindan pennou daoulin he merc'h; ar pez avad a veler stang avoalc'h eo, pa en em gaf ar vam hag ar verc'h tost an eil d'eben, an hini n'ho anavesse ket a elfe buan avoalc'h, o sellet oc'h ho guiscamant, kemeret ar verc'h evit ar vestrez hag ar vam evit ar plac'h pe ar vatez.

Ar solanite a ro an iliz catolic d'he gouliou, an dro a ro d'he ofisou, dreist oll e Rom, a laca dalc'h mad da zistrei d'ar guir Iliz ar re n'emaint ket enhi. O velet kementse, meur a hini a anavez ar virionez; ar pez n'o doa ket great o lenn ar guella levriou, nag o clevet ar c'haera prezeguennou. Er bloa-ma adarre ez eus guelel eur Zaou pe zaou o tont da veza catoliked goude beza bet e Rom da c'houl ar Rouanez.

Ar pez a ra plijadur d'ar Pap Pii Nao er mare-ma, eo an testeniou a garantez hag ar zicourou a zigaser d'ezhan a bep corn eus ar bed christen. Ar c'heleier eus an Itali a ra ive vad d'he galon. E kement leac'h ma zeo lezet an Eskibien da zistrei d'ho escoptiou, ar bopl a ra d'ezho eun dignemer ar c'haera. Eno, couls hag ama, ar bopl a zo douguet braz evit Viket Jesus-Christ.

Doue a laca, pa zonjer nebeuta, he zorn da boueza var ar re a ra torfejou e cuz. Er guer a Fermo e voue laz et eun den a iliz brema ez eus eur pennad, ha ne voue ket gallet gouzout piou en doa he laz. Tamallet e voue cals, mes ne voue ket gallet cregui en hini en doa gret an taol. Mes ar c'holera so deut, hag ar muntret so bet taguet. Bet en deus ar c'hras da gaout beleg araog mervel, hag en deus lezet var he lerc'h eul lizer evit discleria oa hen en doa laz et an den a iliz ma comzomp anezhan, hag oa bet pouz et da guementse gant an dispac'herien.

E Rom ez eus maro eur manac'h, a urs Saut Fransez, hag a voa guinidig a Bologn. Maro eo evel eur

zant, ha kercent ha ma voa gouezet e voa tremenet, oll dud Rom a felle dezho dont da velet ar c'horf.

Epad ma zea evelse an dud a vanden da boket da zaouarn ha da dreid ar manac'h, eur bourc'his, sounn he benn gantha, ha neubet boazet dioc'h guiziu ar gristenien, a lavare d'an hini en deus scrifet kement-ma :

— Perag ober kementse a freuz evit eur manac'h maro? Pe seurt burzudou ! pe seurt taoliou caer en deuzhen great en he vuez?

— Ar manac'h paour-ze n'en deus great burzud ebet. Pell dioc'h eno, cuzet a rea he vuez guella ma c'helle, hag a veac'h e c'houie he vreur eur edo en ho zouez.

— Ha perag neuze-ta ober kement a drouz?

— Aotrou, ne ket ni eo a ra an trouz-ze; ar manac'h keaz-ze eo. Den n'hen anaie, ha cousgoude kercent ha ma zeo maro, en deus lak et ker Rom oll var zao. Ha ni marteze pere ou eus labouret ha poaniet, Doue a voar peguement, o clasc caout eun tamig brud etouez an dud, n'omp ket deut a benn da lacat comz ac'hanomp.

Ar bourc'hiz a zavas neuze he fri, hag a respontas d'ar scrifagner oa guir avoalc'h ar pez a lavare.

NAONET. — En escopti Naonet ez eus parreziou e-leac'h ma zeo en em glevet an dud evit cas eur zoudart d'hon Tad Santel ar Pap. En eur barrez ne voa den iaouanc ebet etro da vont. Ar barrez e doa gouscoude c'hoant da gas unan.

Dont a ra d'en em guinnig dezho eun den iaouanc eus eur barrez all, a beleac'h ez oa eat eun deg den bennag da arme ar Pap. An den iaouanc-ma a ioa eat dija daou vreur dezhan. He dad a zo coz; deg vloaz ha triugent, ha n'en deus mui nemet ar map-ma evit beza goalen he gosni. Ar map-ma ta a voa eun tamig nec'het, hag hen da vont da gaout he dad araog rei he c'her.

An tad, goude beza he zilaouet, a lavaras : Va map, ar relijion da guenta; na vez ket nec'het ganeme, Doue n'am dilezo ket. Mar bez izom, me esper e vezo cavet eneou carantezus, hag o devezo soursi ac'hanon. Kea eta en hent, ha va bennoz ganez. » Eun derveziou bennag goude, e tiblasse da vont da Rom. Tud ar barrez o doa savet etrezho peadra dezhan da ober he veach.

Mend. — E meneziou ar Seven ez eus aleiz a brotestanted. Mes distrei a ra calz anezho d'ar guir iliz. Etouez calz a re all, e comzer eus eur c'hreg iaouanc a voa clan gant he c'hlenvet marvel. Lacat a reas kercent person ar barrez d'he c'haout. Pa voa deut, e lavaras dezhan e felle dezhi mervel er guir relijion. Ar person he recevas, dirag testou, e reng bugale an iliz, hag a roas dezhi goudeze he sacramentou.

Hoguen ar pastor protestant o veza clevet kementse, en devoe strafuil. Cas a reas da guenta he c'hreg da gaout ar glanvourez evit clasc he distrei dioc'h ar pez e devoa great. Mes coll a reaz he foan. Neuze ar pastor

a deviaz he unan, o sonjal e raje guelloc'h evit he c'hreg. Pried an hini glan o velet e voa houma skuis maro oc'h ho c'hlevet, a lavaras d'ar pastor en em denna, hag a lakeas kercent hat ar Mear evit ober dezhan mont en he dro.

Ar glanvourez e devoe c'hoas goassoc'h stourmat da zouten. Bez e devoa eur c'hoar protestantez hag a reas kement a ellaz evit he lacat da drei kein d'an iliz catolic. Mont a reas bete stleper kuit eun imach d'ar Verc'hez a voa e kichen ar guele.

Gouscoude an hini glan e deus dalc'het mad, ha maro eo er guir feiz. Maro eo he daoulagad troet varzu imach Mam Doue, hag en eur venniguen ar beleg en doa digoret dezhi dor an Env. G. M.

HISTOR ZANTEL.

EIZVED PENNAD.

(Tennet dicar Levr an Exod).

Kenta gouli var ann Ejipt, ann dour troet e goad.

An Aotrou, Doue a lavaras da Voizes : Pounneret eo kaloun Pharaon; ne fell ket d'ezhan lezel ar bobl da vont kuit. It d'he gavout mintin mad; diskenn a ra euz he balez d'ar ster, ha kemerit enn ho tourn ar voalen a zo bet troet enn eur serpent. Hag e leverot d'ezhan : Ann Aotrou, Doue ann Hebreed en deus va digasset d'ho kavout evit lavarout d'ehoc'h : List va bobl da vont da ober d'in eur zakrifis er gouelec'h, ha bete vrema ne ket bet falvezet d'ehoc'h va zelaou. Diouc'h ar pez az ann da ober, e ouiot eo me ann Aotrou. Mont a rann da skei dour ar ster gant ar voalen, hag ann dour a vezo chenchet e goad. Hag ar pesked a zo er ster a varvo, hag ann dourion a vreino, hag ann Ejiptianed, oc'h eya dour ar ster, a vezo taghet mui-oc'h-vui gant ar zec'hedi.

Ann Aotrou a lavaras c'hoaz da Voizes : Livirit da Aaron : kemerit ho koalen, hag astennit ho tourn var zourion ann Ejipt, var ar sterion, var ar goaziou, var ar guerifou ha var an holl lennou, evit ma vezint chenchet e goad; ha ra vezo goad e holl zour ann Ejipt, ken ebarz el listri koat, ken ebarz el listri pri.

Moizes hag Aaron a reaz ar pez en doa gourc'hemenet ann Aotrou. Aaron a zavaz he voalen, a skoaz var zour ar ster, dirag Pharaon hag he zervicherien, hag ann dour a oe chenchet e goad. Hag ar pesked a oa er ster a varvaz, hag ar ster a vreinaz, ha na helle mui ann Ejiptianed eva dour ar ster ha ne oa nemet goad dre holl vro ann Ejipt.

Majisianed ann Ejipt a reas ar memes tra gant ho chalmou, ha kaloun Pharaon a galedaz, ha n'e zelaouaz ket Moizes hag Aaron, var ar pez en doa gourc'hemenet an Aotrou. Hag e troaz he ghein, hag e tistroaz d'he balez, ha ne zigoraz ket he galoun ar veache c'hoaz.

(Ar gouli kenta-ze a badaz seiz devez. An dour a gave gant an dud a oa chenchet e goad gant ar vajisianed, a oe digasset d'ezho euz ar mor, pe euz ar c'harter ma edo ann Hebreed o choum enn-han. Rak gouliou ann Ejipt na gouzent ket var zouarou ann Hebreed.

Doue a gastiz aliez ann dud dre leac'h ma ho deuz pec'het. Ann Ejiptianed ho doa beuzet enn ho sterion bugale ann Hebreed, ha Doue a ro d'ezho da eva, kouls lavarout, goad ar yugale ghez-se. Pebez kentell

Eil c'houl. Ar Raned.

Abenn seiz devez, ann Aotrou a lavaras c'hoaz da Voizes : It da gavout Pharaon en he balez, ha livirit d'ezhan : Chetu Petra a lavar ann Aotrou : List va bobl da vont evit ma ra d'in ar zakrifis. Ma na fell ket d'ehoc'h he lezel da vont, melia da skei ho rouantelez penn da benn gand raned. Ar ster a daolo raned a c'hruilladou, hag e pignint ac'hano enn ho ti, er gampr ma kouskit enn-hi, ha var ho kuele, hag e tiez ho servicherien, hag e tiez ho pobl, enn ho sourniou hag er boedou ha pezo aozet.

Hag ann Aotrou a lavaras da Voizes : Livirit da Aaron : Astenn da zour var ar sterion, ha var ar guaziou, ha digas raned var zouar ann Ejipt.

Hag Aaron a astennaz he zourn va zourion ann Ejipt, hag ar raned a biguaz hag a c'holoaz douar ann Ejipt.

Hoghen ar ghel'herien, pe ar vajisianed, a reaz ar memes tra gant ho breou. Digas a rejont ivez raned var zouar ann Ejipt.

Kouskoude, Pharaon a c'halvaz Moizes hag Aaron, hag a lavaras d'ezho : Pedit ann Aotrou evit ma plijo gant-han lemel ar raned diouz-in ha diouc'h va bobl, hag e lezinn ar bobl da vont, ha da ober eur zakrifis d'ann Aotrou.

Moizes a lavaras da Pharaon : Merkit d'in ann dez ma pedin evid-hoc'h, hag evit ho servicherien, hag evit ho pobl, ma vezo kasset ar raned dicar ho tro, ha ma choumint ebarz er ster, varc'hoaz, eme Pharaon. Ha Moizes d'he dro : Ober a rann, hervez ho ker, evit ma ouezet penaoz ann Aotrou, hon Doue n'en deuz ket he bar. Ia, ar raned en em denno kuit dicar ho tro, ha diouc'h ho ti, ha diouc'h ho servicherien, ha diouc'h ho pobl, hag he choumint ebarz er ster.

Neuze Moizes hag Aaron a zeuz kuit a zirag Pharaon. Moizes a bedaz Doue, ha Doue a reaz ar pez a c'houlenne. Ar raned a oa enn tiez, er c'herion, hag er parker a varvaz. Dastumet e oent e bermion braz meurbed, hag ar vro a oe karghet a flear gant ho epad eur pennad amzer.

Hoghen Pharaon, o velout e oa eat ar veac'h dicar-n-ezhan, he galoun a bounevez, ha n'a zelaouaz ket Moizes hag Aaron er pez a c'houc'hemenne Doue.

(Setu Petra a peurliessa ar voall bec'herien; pa bouez dour ann Aotrou Doue var-n-ezho int prest da zistrei; ha pa zeo eat ar bar ebion, e choumont da vreina enn ho zechou fall).

EUR SKOL-NOZ.

VAR AR ZUL.

III.

PEC HED A ZISPRIZ.

« Al labourerien zùl a ra fae war lezenn Doue. Doue en deuz lakeet en he lezenn an difenn da labourat d'an deiz santel. Mes al labourerien zùl ne zalc'hont kont ebed euz an difenn-ze, disprizout a reont komzou Doue. Mes, o tisprizout komzou Doue, lezennou Doue, e tisprizout Doue he-unan; rag, disprizout eul lezenn, a zo disprizout an ini en deuz he greet hag he douget. Hogen, gouzout a rit petra a vez greet d'ar re a zispriz, oc'h ho zorri, lezennou eur vro ha dre enno an ini a ren er vro. Kaset e vez an archevien da grogi enn-ho; greet e vez d'ezo mont dirag ar varneryen evid rentà kont d'ezo euz ho c'homzou hag oberou, hag enno e vent kondaonet, ervez ar grevuzded euz ho faot. Ha ma l'evel-se e raio Doue d'al labourerien zùl; ho barna a raio, pa zaffont euz ar bed-ma, he barna a raio da fin ar bed, er varn jeneral, hag ho c'hondaoni d'an tan eternel, mar marvont en ho sec'hed. »

IV.

PEC HED A ZAOTREDIGEZ HA ZOKEN SAKRILACH.

« Lavaret or beuz, deja penaoz, en em zervicha euz an traou sakr, binniget, santel, evid on ezommou ordinal, komun, evel ma velle kemmer eur c'halir evid efa gan-t-ha oc'h on taol or bannac'hou dour, gwin, sid, lakaat dour binniget da ober or zoubenn, gwiska gwiskamant an oferenn evid mont da bourmen, da vragal, ober magazin euz eun iliz, ha traou all evel-se, a vez saotri, profani anezo, a vez ober eur zakrilach. — Perag? — Abalamour an traou-ze oll, o veza bet binniget, konsakret, santelezet dre bedennou an iliz, na dleont mui servichout nemed evid al lidou santel, nemed evid ezommou ar relijion. Hogen, ar zùl a zo bet ivez binniget, santelezet, konsakret. — Gan piou? — Gan Doue he-unan. Ia, Doue he-unan, hen lavaret or beuz, gonde beza krouet ar bed, d. l. c. an Nev hag an douar gan kemment a zo enn-ho, e c'houec'h devez, a gemmeraz he repoz d'ar zeizved devez, a vinnigaz hag a zantelezaz ar zeizved devez hag a c'hour e hemennaz d'an dud, adaleg an amzer genta, ober evel-t-ha, respeti evel-t-ha, an deiz santel, kemmer ho repoz d'an deiz-se hag hen tremen e servich ho C'hrouer. »

« Evel-se, ar zùl a zo greet, neket evid al labourou ordinal, ha nebeutoc'h c'hoaz evid an dizurzou, mes evid servicha Doue ha pourvezi da ezommou an ene. Mar yit eta da gemmer an deiz santel-ze evid ober ho labourou pemdezyeg pe evid en em roi d'ho tizurzou, e saotrit, e sklabezit aneza hag e rit eur zakrilach. Piou ac'hannoc'h, mar en deuz c'hoaz eun tam feiz benag en he galon, hag a grete kemmer eur c'halir evid efa gan-t-

ha eur banne gwin pe zid? Aon en deffe da veza skoet gan Doue, o vont evel-se da brofani eul lestr sakr. Mes, ar zùl, ha n'ed eo-en ket ivez eun deiz sakr, eun deiz binniget! Ar c'halir a zo bet konsakret gan an Eskop. Mes ar zùl a zo bet konsakret gan Doue! Piou euz an daou eo ar brasa beleg? O! me a gav d'in gwelet Doue ac'hann, er c'henta seizved devez war beini en deuz paret an lieol, me a gav d'in gwelet aneza korunet a c'hloar, ar c'houabr, oll e gwenn, o servichout d'eza da zupiliz, hag ar stered, lugernuz, leun a c'hened, da stol, ia, me a gav d'in gwelet aneza o vinniga ar zeizved devez hag o lavaret goude d'an dud: « Respetit ma « deiz. Na yit ket d'hen saotri dre ho labourou ordinal « ha dre ho tizurzou. Ma deiz a zo santel; me ma-unan « em beuz hen greet santel, hen binniget. Piou benag « hen saotri, a varvo. »

« Respetom ha santelezom eta mad deiz an Aotrou Doue, va mignoned ker, ha ne gouezo ket he voallennou war-n-om, er bed-ma, war-n-om, war on tud, war on anevaled, war on douarou, ec'hiz ma welom o c'hoarvezout brema, a beb mare, na ne viffom ket taolet en ifern goude or maro. Respetom ha santelezom deiz an Aotrou Doue mad, hag e lakaffom aneza, er c'hontrol, da skuilla war-n-om ha war gemment on euz er bed-ma, he c'hrason, he vennozyou, he vadoberou a beb sort, ha da zigori d'eom dor he varadoz goude or maro. Amen. »

J.-K. KERZALE, beleg ar Zalet.

BUEZ SANT SAMSON.

(EIL PENNAD.)

Doue a roaz da anaout Santelez Sant Samson, dre ar galloud a roaz d'ez-han da ober burzudou pe miracleou. Sant Dubrici, escop Caerleon, o veza deut d'an abatti evit ar velegiach, a roaz da Samson an urs sacra avieler. Etre m'edo an Aotrou Escop oc'h ober beleien er guiz-ze, ec'h erruaz eun dra caer braz, Gouelet e voue e chapel an abatti eur goulm guen-can o c'hournijal, hag o vont da bara var ben Samson, evit rei da c'houzout d'an holl gand pegument a larguentez ar Spered-Santel a skullie he c'hrassou en ene an avieler iaouanc. Ar burzud-ze a c'hoarvezaz etre m'edo daouarn an Escop astennet var bennou ar re o doa resevet eun urs nevez benag. Ar memez burzud a erruaz en deiz ma voue beleget.

Vertussion ken caer a zongue he vrendeur en abatti da guemer skner varnez-han. Ar braz anezho a denaz da labourat gand mui a nerz evit mont araok en hent ar silvidighez. Mez e pez leac'h ne c'hell an drouc-spered luia unan benag? Var daouzec abostol, e kever eur Judas hag e couent Samson e kever ive eur rilijuz fall benag. Ar reman a vele gand poan Santelez Samson ho barne holl. Ho c'hounnar e kenver ar sant a deuz da veza ken braz, ma oie cavet daou fallagr avouallac'h evit clask an tu da zont da lemel he vuez diganhan. Mez neuze e voue gouelet e teu Doue da zigueri he galon d'he vugale

ha d'ho c'huzet evel dindan he ziouskel evit ho drouk euz ar barrou amzer a leusk avechou an ifern en ho c'neb. An daou den milliged-man eta evit dont a benn euz ho zorfed a daolaz eun nebeud poezon en eur skudellad zour a die Samson da eva pa deuje sec'hed d'ez-han. Eun nebeud amzer da c'houde, setu ar sant eb sonjal e drouk ebet o eregui er skudellad zour evit terri he sec'hed. Mez, oh! burzud! Ar skudel a dorraz e tre mil dam, ha dour ha poezon d'an douar.

Eur burzud ken braz a bicaz kement calon unan euz an daou, vuntrier-man, m'a zeaz var an heur da n'em strinca da dreid ar sant, da c'houlen diganhan pardon goude beza anzaet he dorfed. He c'hlae'har a voue ken braz ma n'em lacaz kerker da ober pinijen ha ma teuz ahoudevech da ren eur vuez euz ar re santella. Evit eguile, a deuz er c'hontrol da veza muioc'h counnaret a eneb Samson: kement a boan a rea ganhan beza manket he daol, ma voue tost d'ez-han mervel gand an despud. Mez he fallagriez ne jommaz ket pell eb castiamant. Mont a reaz en-han eun drouk-spered ha ne leze ganhan an disterra repos na noz na deiz. Sant Samson, dre m'en devoa eur galon carantezuz meurbed, a guemeraz eun drouc-spered ar vrassa euz ar reuzeudic-man. Euz he velat kement er boan, ec'h ancounac'heaz he fallagriez, hag e teu da denna an drouk-spered-ze euz a gort ar posseded, en eur skuil varnez-han oleo sacr ha dour beniguet. Er guiz-ze eo e pareaz he gorf hag he ene.

Mez ar brud euz a Zantelez Samson hag euz ar burzudou a rea, a lake calz tud da zont he veter a bell-bro, hag a rea comz calz anez-han. Evit troha her da guement-ze, ar Sant a c'hulennaz digand Sant Ilut, mont d'eun abatti-all a ioa en eun enezen pell-braz er mor, ha gouarnet gand Sant Pyron. Mez ne jommaz ket pell en abatti-ze, rag prest goude m'edo erruet eno, e voue casset kement d'ez-han da zistrei da guichen he dad en doa eur c'hoant vraz d'he velat eur vech c'hoaz abars mervel.

An den santel Pyron a c'houe hemennaz da Samson mont da velat he dad. Samson a guemeraz ar goue'hemenn-ze evel pa deuje euz an env, hag a n'em laca kerker en hent assamez gand eur rilijuz-all a voue roet d'ez-han evit compagnun. Etre m'edont o veachi hag o treuzi eur c'hoaz braz, an drouc-spered a n'em ziskuez d'ez-ho dindan eur furn a blac'h, hag a ra he fossubl evit ho zenti. Mez ar spered-fall o velad ne voa ket evit dont abenn deuz Samson, a daol he aral var he gompagnun: Her sejeja a ra d'an douar, ha neuze e teu d'hen ruza a dreuz dre ar spern hag an drez, ha goude e ro d'ez-han eur guiscad bac'hadou. Samson glac'haret-oll o velat ar goal dretamant a reat d'he gompagnun, a deu en eun taol da ober daou virac: en em rei a ra ervez he gustum d'ar beden ha d'an orezon, ha goude en eur ober sign ar groaz, e laca an drouc-spered da guemer an teac'h, hag e laca pare coulz ha biscoaz he ghen-beachour. Setu hi adare eta ho daou en hent, evel pa ne vije erruet goal rancontr ebet ganho.

En devez ec'h erruont da skei var dor Ammon. Ar

paour kez eoz pa velaz he vap a voue ken carguet a le-venez, ma cret sclear ne vankje mui netra d'ez-han, ha dre ma c'hanaveze santelez Samson he vap, e covez d'ez-han he oll bec'hejou evit lacat he ene da vont neat dirag Doue. Samson hen, ne voa ket nebeutoc'h he levez, o velet santimanchou mad he dad. Pedi ra Doue ken galonec ma teu ar Env da rei ar sec'hed d'ar c'hlan-vour. Ammon oc'h anaout mad da bion edo gleour euz ar pez a ioa c'houarvezet ganhan, a deu da rei ar rest euz he vuez da Zoue: en em ober a ra rilijuz, hen hag he bemp-map all, Breudeur da Samson. He bried o caout mad kement-ze a reaz ar memez tra: en em ober a reaz ive Leanez, hag e tremenaz ar rest euz he vuez er santelez en eur gouent merec'hed. Er guiz-ze eo e teuz an tiad-santel-ze da guiviada an eit euz eguile, evit mont da glask er c'houenchoù an Hini a garrient ar muia var an douar. Eur verc'h a ioa ive; mez houman a gavaz re rust ar vuez-ze evit-hi Samson, pa ne voa ket evit ober vell he lekeaz o ho c'herent nessa, en eur zont d'ho fedi d'he mirer muia ma c'herent euz an drouk hag euz safanar bed.

Evit Samson, goude beza trugarekeat Doue euz ar grassou en doa roet d'ez-han ita de dud, a zistro laouen braz d'he enezen. Mez he levez ne badaz ket pell; rag prest goude ma edo distroet d'he gouent, en euz ar glac'har da velet Pyron o vervel. He c'hlae'har a deuz c'hoaz da greski: pa velaz o doa c'hoant an holl venec'h euz ar gouent, d'hen lacat da abat, da lavaret eo da veza mestr varnez-ho. Ober a reaz ar pez a ioa en he c'halloud evit pellat euz ar gark huell-ze; Mez stoui a rancaz ha kemer guir an hini maro.

BODEUR.

(Eur pennad all eur wech all.)

Perac ar Wretonet n'ha ket kenta pobl a zo var an douar.

(EIL PENNAD.)

— Aotrou Ian, m'lem euz clevet c'hoaz lavaret penaoz e Breiz ar merc'het a c'hoar ive braoic sevel ho biz bihan; daoust ha guir e ve an dra-ze?

— Chom a ri peoc'h, marmouz! Ne c'houzoud ket pegement a vez a res d'inn. Ia, stouas l'beza ez euz ive em bro merc'het hag a gav mad ho banno.

— Ec'h! Nag an dra-ze a dle beza euzuz da velet, eur yaouez vezo?

— Netra euzussoc'h, villoc'h, donjerussoc'h.... Biscoaz n'em euz ghellet compren penaoz en eur vro ker vad ha ker cristen e c'hellet en em zishenori evelse.

— Ha ne ve ket ghellet caout an tu da viret ouz an dra-ze?

— Clask aualec'h a zo bet great hag a reer ato. E Bro-Zaoz ez euz tud hag a zo en em glevet evit kement-ze; dre ar pez o deuz great, an dud-se a zo dija deut a benn da lakaat serra cal hostalirou, ha da vihanaat an niver euz ar vezvierien. E Breiz ar bersoune a zar-

moun ive aoualc'h a enep an tech fall-se ; mes ne zelaouer ket anezho. Evelse e kendalc'her d'en em vezvi ha da zishenori ar vro en eun hevelep fesoun ma leverer dre bevar c'horn ar bed : *mezvier evel eur bretoun*. Ma vijen bet persoun, me gav d'inn em bije elasket sevel eur vreurez evit kement-se : evit mont er vreurez-se e vije red rej ar gher da jom hiviziken eb beza mezo hag eb darempred an hostalirion. Ar vretounet a zalc'h mad d'ho gher : eur veich m'o deffe roet ho gher evit ar pez a lavaren bremaic, e talc'hient mad dezhan, hag evelse e lamfent divar an hano a zougont, ar vez a zo stag outhan abalamour d'ar vezventi. Mes ho lakaat da rei ar gher-se eo a ve ar goassa hag an diessa. Couls goude ar vretounet a ve kenta pobl a zo var an douar anez ar vezventi. Caled int oc'h ar boan, mad da labourat, stard en ho feiz, guirion en ho c'homzou, leun a nerz-caloun : n'e zeuz oc'h ho c'holl nemet an tech millghet-se. Ah ! ma c'houlfent pebez dismegans a denn varho ar vezventi a berz ar boblou all, ne lakafent birviken mui ho zreid en eun hostaliri. Gouzout a res, *Coll-Bara*, em euz tremenet eun nebeudic amzer e Rom ?

— Ia, clevet em euz ac'hanoc'h o comz euz an draze aveichou. Daoust hag e Rom ez euz ive cals mezvieren ?

— Hini ebet, couls lavaret. Mes en anv e paker eno an darsien aveichou, ha setu petra c'hoarvezas ganen. Casset e ouen da hospital ar *Speret-Santel*, tost da ilis Sant Per, e leac'h ma thighemerer an oll, eb goulent digant den na piou eo, nag euz a beleac'h e teu. P'oan deuet da yellaat, ez ean aveichou da zelaou an *infirmieren* a en em zastume evit caozeal en dro da eun daol vras var behini edo al louzeier. Biscoaz em buez n'em euz bet kement a vez evel em boue eno eun devez a oue.

— Sell ! penaoz-ta ?

— Setu ama penaoz :

Etouez an *infirmieren*-se ez oa unan coz, he hano *Marchionni*, hag a ioa bet e servich ar Frans epad brezellion ar *revolution*. Ar zoudard coz-se, griz he varo ha guen he vleo, a c'houie histor kement bro zo er bed, ha setu perac e se' ouet anezhan muioc'h eghet ar re all. Hoghen, eun deuz e comzas evel-hen : « ne c'houzoc'h ket, c'houi, ez euz du-hont en tu all d'ar meneziou ha pell-pell en tu all d'ar Frans eur vro hag a « reer Breiz anezhi ? »

O clevet an hano-ze, e tigoris va dioucouarn franc, hag e c'houlennis ouz an hini en devoa comzet evelse ha het oa bet biscoaz er vro m'edo o paouez henvel. Foug bras a ioa ennhon o clevet hano a Vreiz betec er ghear a Rom. Ar zoudard coz a respountas : « nan, « emezhan, n'oun bet biscoaz er vro-ze ; couls goude « ec'h anavezan mad he histor. »

— Countit an histor-ze-ta, *Marchionni*, a lavaras ar re all gant eur memes mouez ; ia, countit deomp histor Breiz.

« — Selaouit-ta, eme an *infirmier* coz ! Red eo gouzout penaoz ar Vretounet e zo bet gueich all eur bobl

« bras, ker bras hag an hini a zo e rouantelez hon Tad « Santel ar Pab. Ar Vretounet o devoa neuze rouanet « euz ho bro ; n'edont e dalc'h den all ebet, ha beva a « reant eurus hag e peoc'h en ho rouantelez. Mes eun « devez Roue Frans pehini en devoa c'hoant da ghe- « meret Breiz evit creski he rouantelez, a c'houlennas « ouz tud he lez petra a dlie da ober evit dont a benn « euz ar pez a ioa en he speret. Lod a respountas an « dra-ma, lod all an dra-hont. Erfin, unan ha n'oa ket « ar sotta euz ar goumpagnunez, a lavaras evel-hen : « Aotrou Roue, emezhan, arabat eo cass soudardet di, « rac an dud-se ne lammont ket araoc ho skeud : ha « var zouar ha var vor, n'o deuz ket ho far evit breze- « lekaat. Mes mar em c'hredit setu ama penaoz ec'h « en em ghemeroc'h. Ar Vretounet a gav mad ho banne ; « en em vezvi a reont evel loanet pa o deuz da eva leiz « ho c'hoi. Red eo cass *chistr* dezho mui ma vezo « ghellet ; en em vezvi a raint gant ar *chistr*-se, ha pa « vezint mezo, c'houi a gouezo varho gant oc'h arme, « hag evelse e teuc'h eaz da veza mestr euz ho bro.

« Ar Roue a gavas mad an ali ; mes ar Vretounet a « ev kement ma n'oa ket e Frans a *chistr* aoualc'h evit « ho mezvi oll. Ar Roue a lakeas digass avatou euz a « bep corn ar bed hag a brenas kement bariken c'houl- « lou a c'hellat da gaout, ha goudeze e cassas he *chistr* « da Vreiz en eur bedi ar Vretounet d'hen dighemeret « evel eur merc euz he garantez evitho, hag en eur la- « varet dezho hen eva d'he *ie'het*.

« Ar Vretounet a oue laouen bras o velet kement all « a *chistr* o tont dezho ; rac ar bloavez a ioa bet fall en « ho bro ; ha ractal ec'h en em lakejont da eva da « *ie'het* ar Roue a Frans. Mes eva a rejont kement ha « kement c'hoaz ma teujont oll da veza mezo, oll, « bras ha bihan, coz ha iaouanc, goazet, merc'het ha « bugale ; hag eur veich ma ouent mezo evelse, ez « ejont da ruill ha da goneza ama hag aount, hed an « hentchou hag e doug ar c'bleuzion. Neuze, ar Roue a « Frans pehini ne c'hortoze nemet ar mare-ze, a zastu- « mas he arme hag a deuas gant he zoudardet evit ke- « meret Breiz. Ar Vretounet, o veza oll mezo, ne c'hel- « jont ket en em zifenn, hag ar Roue a Frans a oue eaz « dezhan ober he vestr dezho. Abaoue an amzer-se « Breiz n'eo mui Breiz nemet a hano. »

Setu aze histor an *infirmier* coz. M'en assur d'id, *Coll-Bara*, mar d'oa foug ennhon o clevet ar gheriou kenta anezhi, oa ive ruz aoualc'h va fenn gant ar vez hag oan eat lostec aoualc'h o clevet ar gheriou diveza.

— Mes, eme *Coll-Bara*, an histor-ze a zo eur *barabolen*.

— Eur *barabolen* eo zur, eme an Aotrou *Ian* ; mes er *parabolen* ez euz ato eur virionez bennac cuzet, hag ar virionez a zo cuzet er *barabolen*-ze, setu hi ama ; ma ne vije ket a vezvieren e Breiz-lzel, va bro gher, va bro mui caret, ar Vretounet a vije kenta pobl a zo var an douar.

(Tennet divar ar gazetenn c'hallec *l'Ouvrier*).

G^o MORVAN, *person Pluigien*.

Hano ar Zent evit ar Sizun-ma.

DILLUN, 11 C'HEUVREER. — S. Remond-Penafort.

DIMEURS, 12. — Santez Jannet, rouanez.

DIMERC'HER, 13. — Sant Fabian ha Sant Sebastian, merzerien.

DIZIQU, 14. — Ofis ar Zacamant.

DIRGUENER, 15. — S. Faustin ha S. Jovit, merzerien.

DISSADORN, 16. — Eus an Deiz.

DISSUL, 17. — Sul ar Septuagezim.

An Abostol hirio :

Va breudeur, ha ne ouzoc'h-hu ket penaoz en eur redadeg an oll a red, mes unan epken a c'hounit ar priz ? Redit eta e doare gounit ar priz. Ar re a ia da eur c'hourinadeg, a voar divoueret kement a rafe diaz dezho ; ha gouscoude n'her greont nemet evit gounit eur gurunen hag a vreino, eleac'h ar gurunen a c'hortozomp ni ne dai morse da fall.

Evidon-mea red, ha ne redan ket ep gouzout pelec'h ezian ; brezelecaba ran, ha ne scoan ket a daoliou guenn. Hoguen castiza a ran, va c'horf ha delc'her berr varnezhan, gant aoun goude beza prezeguet d'ar re all, na venn va unan collet.

Fallout a ra din e c'houfac'h ez eo bet hon tadou oll dindan ar goabren, hag o deuz oll treuzet ar mor ruz. Hag int bet, evel pa lavarsen, badezet dindan ren Moizez, er goabren hag er mor. Hag o deus debret oll eus ar memes bouet spirituel, (ar man) ; hag o deus efet oll eus ar memes evach spirituel. Rag efa a reant an dour a deue eus ar mean burzuduz, ho heuille ; hag ar mean-ze oa skeuden Jesus-Christ. Hag evitho da veza eun niver braz no voa nemet nebeut anezho hag a blije da Zoue.

Kenta Lizer S. Paul d'ar bopl a Gorinth. IX HA X.

Lizer eur Zoudard d'he Vam.

Goude emgann Solferino, eur Jeneral a scrife e voa bet var an dachen vrezel o velet an dud gouliet ha mac'hanieta.

Eho, emezhan, e veliz eun den iaouanc ous pehini ne allis ket miret da lacat evez. O velet an ear vraz anezhan e vije kemeret evit eun eal. He zaoulagad a ioa savet etrezeg an Env, ha pa dostaiz outhan her c'hleviz o lavaret freaz an hanoiou Jesus ha Mari ; ha neuze e comze euz he vam. Guelver a ris dioc'htu eur medesin. Hema, goude beza guelet he c'houlion, a zisclerias din ne voa pate ebet evithan. Evit guir, mervel a reaz eun nebeut goude. Ar maro ne lamas ket he c'henet digantha. He vizach, evithan da zouguen liou ar maro, a voa c'hoas koant, hag he dal, goloet gant ar goad ha gant he vleo melen, a voa henvel oc'h tal eun Ael. Ar vertuz, zoken goude ar maro, a jom peintet var bizach an den. Cavet e voue en he c'hodellou eur chapeled hag eul levric pedennou eleac'h ma zoa eun imach bennag hag

eul lizer comanset gantha da scrifa d'he vam. Miret em eus al lizer-ze evel eun tenzor. Ne allis ket miret da scuilla daelou oc'h he lenn eno var an dachen vrezel.

Setu ama al lizer-ze :

« Na vezit ket nec'het ganen, evelse, va mam vad ; iac'h oun, hag e pedan Doue calouneg evidoc'h, evit va breudeur hag evit va c'hoarezet vihan. Evit ar vuez a renan, bezit dizourst ; va mistri so contant ac'hanon. Nan, va mam, n'o pezo morse izom da ruzia eus hoc'h August. (August oa hano ar zoudart). Morse, gant gras Doue, ne dec'ho dioc'h hent he zever. An heur vad am eus bet da ellout covez e Brest eleac'h ma zoun bet tri devez. Ar person ac'hano, a drugare Doue, a voar mad ar brezo-neg haga zo bet mad braz ouzin. Eurussoc'h eo evidonme ; he vam zo gantha, hag he c'haret a ra calz, evit doare ; mes n'he c'har ket muioc'h evit n'ho caran, va mam ; an dra-ze ne ell ket beza. Ep dale, mar plij gant Doue, goude beza bet eur pennad mad harluet er broiou pell, ec'h ellin nijal etrezeg va mam vad.

« Ia, va mam, guelet a reot edarre oc'h August, ha me a ielo adarre d'an ti-ze eleac'h ma e deus ho carantez beillet var va c'havel. Eno e fell din kemeret soursi ac'hanoc'h evel ma oc'h eus kemeret eus va bugaleach ; eno e fell din ho caret hag o renta euruz en ho cosni.

« Eur rum bennag eus va c'hamaradet o deus great goap ac'hanon abalamour m'oan bet o covez hag o communia ; roet o deus din eul lezhano bennag. Me am eus lavaret dezho e c'haljent va barn deiz ar vrezel, var dachen ar vrezel. Ha neuze, daoust ha Jesus Christ he unan ha ne deo-hen ket bet goapeat ? Ha ne don-me ket eurus da veza henvel outhan var ar poent-ze, ha da gaout eun dra bennag da c'houzaon evithan ? Ah ! caout a ra din ato guelet va zad, Doue r'her pardono, pa veze en ho kichen, ha pa vezemp-ni ho pugale en em zestumet oll en dro deoc'h ho taou, caout a ra din he glevet c'hoaz o lavaret deomp ne deus netra tenn da c'houzaon pa garer Jesus, ez eo pep tra æz ha scanv pa vez hano da c'hounit eur c'hloar eternal pe d'en em viret oc'h poaniou hag a bado ato.

« Ne roit ket a beoc'h din defot na lavaran deoc'h a beleac'h em eus bet ar pevar-uguent lur am eus casset deoc'h brema ez eus eur miziou bennag. Mad, va mam, mont a ran da lavaret deoc'h. N'oc'h eus-hu ket a zonch, pa oa deut an dervez ma voa red din kimiada diouzoc'h, ha dioc'h va breudeur ha va c'hoarezet, ma voa red din en em denna eus a dre ho tivrec'h ha ma talc'hac'h crog em dillad, epad m'am boa va unan kement a rann-galon oc'h ho kuitat, n'oc'h eus ket a zonch e felle deoc'h oll rei din pehini ac'hanoc'h eun dra bennag ? Digant Charlig e renkis kemeret ar c'hobelidig arc'hiant en doa bet digant he vaeronez. C'hui, va mam, c'hui, c'hui a felle deoc'h e tigaschen ganen montr va zad kez, Doue r'her pardono, hag e lavarac'h din e tlien he verza, m'am bije morse dienez.

« Cridi a rean e vijen bet criz ma n'am bije ket kemeret ar pez a felle deoc'h da rei din. Kemeret a riz zoken c'hoariel Mariic evit he c'hontanti. Mad, va mam,

clevet em eus eo bet goal glan Loizig ha Iannig. Evel ma c'houzon peguement a boan oc'h euz o vaga eun he-velep toullad bugale gant ken nebeut a beadra, em eus guerzet ar montr hag ar c'hobeledig, hag em eus cassét an arc'hant deoc'h. Ne allan ket miret da lavaret deoc'h, va mam, em eus bet eur boan speret vraz oc'h en em zizober eus ar montr, abalamour ma voa bet d'am zad mad da behini e vouelan c'hoaz hirio. Lavaret a rin deoc'h zoken ez oun eat, antronoz m'am boa he verzet, eul leo ac'hann evit he velet c'hoaz eur vech, he starda var va c'halon ha rei dezhan eur poc diveza : ar pez a lakeas souezet braz ar gall mad en doa he brenet diganen. Mes ar zonch e raje an arc'hant am oa bet anezhan vad d'ar vella eus ar mamou!.... »

Ama ec'h echu lizer an eal-ze, eme ar Jeneral ; ar maro a viraz outhan da scrifa ken. Glibia a riz ar paper gant va daelou. Ober a riz enterri ar breton iaouanc-ze e penn eur roz, ha sevel eun tamig bolz taoualc'h var he vez. Euruz en em gavis da ellout lacat va unan eur groas var ar bez-ze, hag e riz ar groas gant scourrou eur vezen zero a voa eno e kichen.

J. GUIVAREC'H, *Mestr Scol.*
Evit ar brezoneg : G. M.

Keleier ha Marvailhou.

An Aotrou Jezegou, vikel e Laz, so hanvet person e Tremeoc.

An Aotrou Caroff, beleg en ti a ean e Castel, so maro er sizun dremenet.

Ar Zazon a bren brema cals chatal e Frans. Er sizun tremenet ez euz eat gantho eis cant ejen en eur vanden. Kig loenet ar vro-ma eo a verzer brema guella e Londrez.

Ar brotestanted ne blij nemeur ar Verc'hez dezho. En dez-all eur pastor protestant a zigouezas gant eur c'houeriat a ioa a brez o c'hrest eur vezen avalou.

— Ac'hanta, Fanch, eme ar pastor, penauz a rez? Bet oas dissul en oferen-bred?

- Ia, Aotrou, bet oan.
- Var betra en doa prezeguet an Aotrou Person?
- Var madelez ar Verc'hez Vari; var an anaoudeguez vad a dleomp dezhi evit ar grasou a den deomp eus an env dre he daouarn.

— Ama ar pastor en em lakeas da brezeg a enep ar Verc'hez en dra c'helle. Fanch her selaouaz eur pennadig, mes skuiza a reas buan, hag en em lakeas adarre da labourat var he c'hresfen. Ar pastor a zalc'h ato da brezeg. Fanch evit lacat troc'ha her a lavaras, ep sevel he gwein :

- Aotrou, mad e cavit-hu avalou?
- Les ac'hanon ta, den dall, da ziskuez dit pe guer guir eo ar pez a lavaran!

— Ne ket an dra-ze eo. Mad e cavit-hu avalou, eme Fanch eun eil guech?

— Ia sur, den egasus; perag ne gafen ket?

— Mad, mar plij an avalou deoc'h, perag droug prezeg eus ar vezen avalou?

Guir a lavare Fanch; penaus caret hor Zalver Jesus-Christ ep caret he vam? G. M.

Eur paotrig a voa en deiz-all azezet e kichen eul labourer a voa o terri mein var an hent braz. An torrer-meir a voa dispag he vruchet, ha dre ma scoe, e velet oc'h hija eur vedalen a voa stag oc'h he c'houzoug. Ar paotrig a lavaras dezhan :

— Da ober petra ema ar braoic-ze aze oc'h ho couzoug?

— Evit m'en devezo Doue truez ouzin, va buguel, eme an torrer mein.

— Doue! eme ar paotrig, va zad a lavar n'euz hini ebet.

— Da dad a lavar an dra-ze, eme al labourer? Mad, sell, paotrig (hag e testumaz eur mean da rei d'ezhan), cass heman d'as tad, ha lavar dezhan ober eun al evelldhan!

N'eus ket pell oa eur vanden soudardet o tremen dre guær X.... Glao pil a rea, hag ar zoudardet kez n'oa ket eun neuden zeac'h en ho dillad. Unan anezho, chomet eun tamig varlerc'h ar re-all, he vontou eat oll e stripou, a c'hrosmole en eur vont : « Guelet oc'h eus biscoaz eur rejimant evel hema? Dour ato! Ma vije da viana roet da bephini dioc'h he c'hrad!

E Pariz e rer brema ruiou ledan, e freuzer ar ruiou coz, e tiscarer an tiez coz evit sevel re nevez en ho leac'h. Ne ket e Pariz epken, mes e Brest hag e meur a leac'h-all e rer ive evelse. Eun den, boaz da evessaat mad oc'h an traou, a lavare, en dez-all, o velet kementse : Hag ar ruiou coz, petra vezo great gantho? — Ar ruiou coz, a voue respontet dezhan, a vezo casset d'ar c'hæriou bihan da ober ruiou nevez. G. M.

PRIZ AN ED.

KEMPER. — 2 C'huevrer.		PONT'NABAT — 24 Guenver.	
<i>Priz ar c'hant liour.</i>		<i>Priz ar c'hant liour.</i>	
Guinis....	45 lur, 88 c.	Guinis....	46 lur, 36 c.
Segal.....	40 lur, 48 c.	Segal.....	44 lur, 45 c.
Eiz.....	« lur, « c.	Eiz.....	40 lur, 63 c.
Ed-du....	7 lur, 55 c.	Ed-du....	8 lur, 43 c.
Kerc'h....	9 lur, 89 c.	Kerc'h....	40 lur, 63 c.
Avalou-douar	4 lur, 50 c.	Avalou-douar	3 lur, 75 c.

Ar Gerant: AR. DE KERANGAL.

Kemper, moulet gand Ar. DE KERANGAL, Mouler an Escopti.

FEIZ HA BREIZ,

KELOU A BEP BRO, HA KENTELIOU VAR BEP TRA,

DIGASSET BEP SUL

Da guement Christen a goms ar brezonec.

Eun Abonnamant d'ar Gazeten a goust :

Evit eur bloas.....	DAOU SCOUET.
Evit c'huec'h miz.....	EUR SCOUET.
Evit tri miz.....	C'HUEC'H REAL.
Eur gazeten ebken.....	DAOU VENNEC.

Ar baqamant a dle beza great araog caout ar gazeten.

ALIOU.

Ar scrijou a ve c'hoant da lacat er gazeten a dleer da adressi oll d'an Aotrou MORYAN, Beleg e Kemper.

Ar paeamanchou a dleer da adressi d'an Aotrou SALAUN, ebken. An abonnamant a guemerer e ti an Aotrou SALAUN, librer, ru Kereon, e Kemper.

KEMPER, 16 C'huevrer 1867.

Petra bennag ma zeo an dud alies dianaoudeg, ha ma zeo eur sotoni evit an hini a ra vad d'ar re all gortoz anaoudeguez vad eus ho fers, gouseoude pa dremen eun den he vuez oc'h ober vad d'he nessa, eo rouez ne deufet ket abred pe zivezad da rei dezhan eur merc bennag a anaoudeguez vad. Ma na vezer ket anaoudeg epad he vuez en he guenver, da viana pa deu ar maro dezhan e ten da zonch d'an dud etouez pere en deus bevet eus ar vad en deus great dezho. Ar c'holl a reont a zihun al leallet en ho c'halon. Kementse on eus guelet e Kemper er sizun dremenet. Eun doctor medesin, hanvet an Aotrou Mouton, a so maro. An den-ze en doa tremenet he vuez oc'h ober ar vad. Nos deiz e kichen guele ar re glan, en deus berreat he vuez he unan evit savetei buez ar re all. E kichen guele ar re baour dreist oll eo e vije cavet dalc'h mad, rag ne labourer ket evit destum madou. Pell dioc'h eno, rei a rea he dra he unan, ha ma vije red dezhan avechou lezel eun den clan evit mont da gaout eun all, eo var dro ar paour ez aje da guenta. Evelse an oll so bet glac'haret, Kemper oll so bet e canv pa o deus clevet oa dent Doue d'he c'hervel. Biscoaz marteze e Kemper n'oa bet guelet kement a dud, a bep reng, oc'h heul eur c'horf maro d'ar bez. Daelou ar beorien, keuz ha glac'har an oll, setu eno he veuleudi.

Ne'm eus ket izom da lavaret e voa an doctor medesin ma comzomp anezhan eun den a feiz, eur c'hristen mad, eun den a heuille mad he relijion. Anez n'en divije ket great ar vad en deus great ha ne vije ket bet kement a dro da ober canv dezhan. Rag caer a vezo, ne gredan ket e ve cavet tud ep relijion da ober vad evelse. An den a labour, a laca he boan, a reng hen ober evit Doue pe evithan he unan. Mar en deus feiz, ma labour evit Doue, e cavo nerz avoalc'h evit hen ober er guel eus ar re-compans en devezo en Env, ha n'e c'hortozo ket anaoudeguez vad an dud. Mar deu gouseoude an dud da veza anaoudeg en he guenver, en devezo muioc'h evit na

glaske. Mes ma n'en deus ket a relijion, e tle labourat evithan he unan, e tle clasc he azamant pe he interest. Ne velan ket ec'h alfe ober ken. Penaus caout carantez an nessa eleac'h n'ema ket carantez Doue?

Pa emañ gant Kemper, e livirin penauz ar zoudardet eus ar pevare ha daouinguent rejimant a linen, pere a so brema er guær-ma, o deus roet eur skuer a garantez christen er mis tremenet. Epad an dervezioù amzer ien ha criz so bet, epad ma voa an douar goloet gant an erc'h, o deus digasset eur zam bara d'an ti ma vouller ar gazeten-ma, en eur bidi ar mouller da rei ar bara-ze d'ar beorien o doa muia izom. Gouzout a reant ez eus e ker aleiz a labourerien, dervezfourien, micherourien pere ne allent ket labourat en dervezioù-ze, ha pere a so ker berr, ma vane bouet dezho ive kerkent ha ma zeo red dezho chom ep labourat. Ar zoudardet, an oll her goar, ne ket huel ho fae, hag o rei evelse ar bara a ellent da zioueret, e reant a dra zur eun dra gaer ha din meurbet a veuleudi.

Rom. — Unan eus ar gouelioù caera a zolanizer e Rom, eo gouel Cador Sant Per, da lavaret eo, an deiz ma zigouezas Sant Per ha ma en em lakeas da brezeg ar feiz er guær guenta-ze eus ar bed. Evit an oll gristenien gatolic ez eo ive an deiz-ze eur gouel-caer, pa zeo guir eo ac'hano eo en deus prins an ebstel lakeat sclerijien ar virionez da skigna en oll broiou. Er bloas daou ha daouinguent e teuas Sant-Per da Rom bez-ze eus eta trivac'h cant pemp bloas varnuguent abaoe ma ema ar Pap er guær-ze. Abaoe e deus diskuezet pe guer guir eo comzou Jesus-Christ pa lavar ne vezo morse treac'h dorojou, da lavaret eo, nerz-an ifern d'an iliz.

Eun den a lavare, n'eus ket pell, dirag ar Pap, en devoa aoun braz o velet ar stad ma ema brema Rom. Pii Nao ne lavaras guer, mes kemeret a reaz eun tam paper, hag e scrifas varnezhan, e guerziou italian, ar c'homzou-ma varlerc'h, hag ho roas d'an den-ze o lavaret dezhan lenn :

« Ar brasa eus an oll faziou e ve eun aoun re vras. Kementse a ra dismegans da vadelez Doue. An hini n'en deus ket a fizians ne gar ket; ne gred ket ez eo ar feiz, an esperans hag ar garantez teir c'houlaouen hag a sclerra er memes amzer, ha ne all ket unan anezho caout sclerijen ep m'o defe ar re all. »

Abaoue ma zeo maro ar c'hardinal Gousset, ez eus maro daou gardinal all, hag ez eus brema pemzeg tog cardinal da rei. Cridi a rer e-rai ar Pap eur c'hardinal nevez bennag da viz Even. Abaoue m'ema Pii Nao var gador Sant-Per, ez eus maro trivac'h cardinal ha tri-uguent. Eus ar re so beo hirio, pemzeg epken so bet great cardinalet gant Gregor c'huezeg; ar re all so great oll gant Pii Nao.

JERUZALEM. — Comz a rer calz eus eun demezel a so en em c'hreat catolikez, hag e deus bet calz da stourm araog gallout distrei evelse oc'h Doue. An demezel-ze zo merc'h da eur pastor protestant. Clevet e doa meur a vech he zad o lavaret e tié pep den beza lezet e frankis da heuilla he greden, hag evel ma crede ferm ne voa a virionez nemet en ilis catolic, ne voa a zilvidiguez nemet enhi, eo falvezet dezhi heuilla ar c'bras a sclerea he speret. Hoguen stourm so great outhi avoale'h. Epad daou vloaz eo bet goal gasset. Erfin e deus gallet mont da gouent itronezet Sion hag en em lacat en urs-ze. Lavaret a rer zoken ez eo eat, evit beza lezet guelloc'h e peoc'h, da eur mission a bell.

Etouez an Armenianet, e tistro calz a dud oc'h Doue. Toir gear, eleac'h n'oa catolic ebet brema ez eus eur pennad, a zo hirio mil gatolic en unan anezho, daou vil en eun all ha seis mil en eun all. Setu petra lavar ar visionerien so eno. Gouscoude evel ma zeus calz muioc'h eno a durket hag a schismatiked evit a gristenien catolic, ar re-ma o deus calz da c'honzaon. Hoguen en despet da guementse e tale'hont mad d'ar feiz.

En enez Zanzibar ez eus nevez savet eur mission evit cas sclerijen ar feiz dreist oll d'ar vorianet eus ar penn dioc'h ar sao-heol eus an Afric. Ar vorianet a dro az avoale'h oc'h ar virionez, hag ar visionerien a esper ober eun eost mad er vro-ze.

En Thibet ec'h iskiner ato ar gristenien. Daou verzer nevez a so eno, da lavaret eo, daou zen laket d'ar maro evit ar feiz.

G. M.

EUR SKOL-NOZ.

(PEMPVED PENNAD).

AL LUN.

AN AOTROU AMBROAZ: « Assa! va mignon, e m'on pell-ze o komz d'eoc'h euz ar zül. Mar komsfenn d'eoc'h ivez euz al lün, eur wech benäg!... Ia, komzom hiryo euz al lün, ha war ze e zän da zanevel d'eoc'h eun dra,

da gonta d'eoc'h buez eur c'here hag em beuz anavezet. »

« Araog dont en ho touez, ez on bet kure, eur pennadig, en eur vourc'hadennig vian, lianvet bourc'hadenn B... Hogen, er vourc'hadenn-ze e voa eur c'here, lesanvet gan an dud gwech an Aotrou Frank-he-C'houzoug, gwech Yann Lip-he-Werenn. C'hwil a welo bremaig peräg. »

« An Aotrou Frank-he-C'houzoug, pa e gwir Aotrou a reet euz aneza, a voa o chom en eunan euz ar ruyou ma tremenem dreiz-ho o vont euz ar presbital d'an iliz, en eur c'hos tiig fall, tec'het eun tammig a gostez. Ha-mä! beb sül beure (vintin), pa zigoueze d'in mont dre ar ru-ze d'an iliz, e voann sür da gavout ma den o skoi war he ler hag o chacha war he ignolenn. »

« Eun deiz 'en em hardiseiz da gomz out-ha hag e lavariz d'ez evel-hen: « Penäoz! va mignon, da zül o labourat! Ha ne ouzoc'h-hu ket eo difennet gad lezenn Doue labourat da zül? Ar zül a zo deiz an Aotrou Doue, an deiz greet euid he zervicha, euid mont d'an ofisou, ha neket euid labourat! »

Ma den a respontaz: « Ar veleyen a zo brao d'ezo lavaret traou d'an dud! Ti ho deüz da loja, ferm ebed da baza, pourvezet e vez d'ezo ho oll ezommou gad an dud, ne vank netra d'ezo, ha setu eo brao d'ezo neuze lavaret d'ar re-all: Grit er giz-ma, grit er giz-se, ne labourit ket da zül, it d'an oferenn ha d'ar gousperou.... Aotrou kure, klaoustre ma oz pize het evel-d-on-me groeg ha bugale da vaga ha da wiska, ha netra da bourvezi d'ho ezommou nemed ho tammig gounidegez, c'hwil oz pize ivez labourat da zül! »

« Me, o klevout ar barrad-ze, a jomaz souezet ha sabac'hiet. Ne vouien mui pe em boa teot em ginou pe n'em boa ket.... Koulskoude, da benn eur maread e tenaz ma spered en dro hag ar prezeg d'in, hag e lavariz da ma den: « Assa! va mignon, ne zon-« jenn ober poan ebed d'eoc'h, o lavaret ar pez em beuz lavaret. Ho mad ha netra ken a glaskenn e kement-se. »

« Hag euid diskouez d'am c'here n'em boa kaz ebed out-ha, e yiz en he di, gad eur zonz em penn. »

« Sivoaz! chom a riz mantret diräg ar pez a weliz. Ar vroeg a voa er gegin, daou vugelig en dro d'ez, ho zri treud-treud, droug-livet, trist, ha goloet a boan gan eun tammig truillou. An tiegezig, an tammig arrebeuri a voa el lochenn, edo paour, distruj: den n'hen divize prizet ho c'hemmeret euid netra. Ma c'halon a vanke d'in, o welet kemment a baourentez, hag e lavariz d'an dud keiz-se: « Goall baour ez oc'h, ervez « a welan, ma zud vad? Dienez oz peuz sür? »

« O! ia, eme ar vroeg, paour a-voale'h, m'hen « assur d'eoc'h. A-liesoc'h a gofad naon or beuz eged « a gofad boued. » Hag en eur lavaret se, e reaz eur zell truezuz ouz he daou vugelig hag e kouezaz diou bikol daeraouenn euz he daou-lagad. Ar c'here,

en, a reaz eur zell lugernuz etrezeg em-hi, mes eb lavaret ger. »

« Me neuze, o troi out-ha, a lavaraz d'ez: « Assa! « va mignon, pegement a c'houezit-hu d'ho tevez? » « C'houec'h real, seiz real, eiz real a-wechou, eme- « z-ha; an dra-ze a zo dioc'h ma ya ar werz. » « Ha-mä! setu ama, eme-ve, eur pez eiz real euid « ho tevez; lezit ho labour hag it d'an oferenn evel « ar gristenien all. »

« Ar vroeg, o welet ac'hannon o roi eur pez eiz real d'he goaz, a reaz eur mous-c'hoarz glaz etrezeg eun on mous-c'hoarz ha ne gompreniz ket d'an ampoent. »

« Kentaat a riz neuze euid mont d'an iliz, ma c'halon poanvet da veza gwelet kemment a drubuill, ha ma spered ivez eun tammig diez: ne gomprenenn ket penäoz ma c'here, o c'honnid c'houec'h real bemdez da viana d'an eil devez dre egile, n'en em gave ket gwelloc'h en he afferyou eged na ree, pa e gwir a-hendall ar beva ne voa ket ken. »

« En deiz-se memez e voueziz petra a voa ma den. Oc'h en em gavout oc'h taol gan ma ferson, da bred lein (ho voa nemed-on daou), e komziz d'ez euz an vizit em boa greet d'ar c'here, euz ar baourentez em boa gwelet en he doullig ti. »

« Hä! zo awia barant, eme an Aotrou Person, euz Yann, lesanvet gan an dud dre ama Yann Lip-he-Werenn, pa an Aotrou Frank-he-C'houzoug. Ne anavezec'h-hu ket aneza c'hoaz? »

« Nan sür, n'ez euz ket daou viz c'hoaz abaoue « e m'on ama. »

« Hag oz peuz roet d'ez eun dra benäg? »

« Ia, eur pez eiz real Truez em boa ouz an dud « keiz. »

« An Aotrou Person a reaz eur c'hoarz hag a lavaraz: « Eiz real efet ha real gan-t'ho abarz an noz, pe « ma ne vent ket efet hiryo, e visfont efet war c'hoaz. « Rag da lün e vez attao goal gan Yann, pa jom eur « gwenneg benäg da deuzi euz a zilerc'h ar zül d'a- « bardaez: Pa oz pezo eun dra benäg da roi, roit d'he « vroeg, ha c'hoaz dre guz. Rag, ma tiskrette Yann « lie deffe he vroeg eur gwenneg benäg etre he daou- « arn, raktal e vent lammet digan-t'hi, ha c'hoaz he « deffe bac'hadou, ma n'ho roffe ket buan a-voale'h. « Pe, ar pez a zo gwelloc'h c'hoaz, roit d'ar baraer « peini a fournis bara d'ezo: Ar paour kez maouez- « se hag he daou vugelig keiz a vize marvet pell-ze « gad an naon, peneved an dud vad. »

« Ama an Aotrou Person a davaz. Me ivez ne gre- « denn lavaret netra: evel eun tam mez em boa da vezo « bet trappet. »

« En deiz-se, ha pas divezatoc'h, e weliz ar wiryonez euz ar pez a lavare d'in ma ferson. Goude ar gousperou em boe eun nebeudig tud da goves, hag o veza ho c'hofeseet setu me da zistroi d'ar prespital. War dro c'houec'h heur anter edo d'an ampoent. O vont a-

Brou eun hostiliri, e kleviz eur vouez o krial: « Eul « lopin gwil, hostitez! Mouez ma c'here euz ar beure- « ma, em 'om-me, pe me a zo faziet kalz!... Assa! « me a renk gouzout ar wiryonez... »

« Ha setu me en ti. « Penäoz! Yann — rag Yann he-unan a voa, oc'h taol gan eun all. — Penäoz! C'hwil eo a zo aze! »

« A! Aotrou Kure, eme Yann, oc'h ober ho meu- « leudi e voam bremaig. C'hwil a zo eur beleg mad. « Ma vez an oll veleyen envel ouz-oc'h, ne varffe « ket an dud paour gad an naon. »

« Nag an dud sec'hedig gad ar zec'hed, ervez a « welan... Penäoz! Yann gez, m'em beuz aon ma fez « eiz real hen deuz douget chans fall d'eoc'h. Me a « gav goall ruz ho penn ha goall dener ho taou-lagad. « Ha ne vech-hu ket ya'h a-voale'h? »

« Aotrou Kure, c'hwil a zo brema oc'h va c'hou... « mes iskuzit ac'hannon euid ar wech-ma. Me a zo eun « den honest ma ez euz war an douar, ha mignon fidel « e vezin ivez keit ha ma vevin. Setu ama eur c'ha- « marad ha n'em boa ket gwelet aneza pell a voa, ha « gad ar joa em boa out-ha, kentre ma ber gwelis, em « beuz ranket pæa eur banne d'ez. Hen ivez gad ar « joa hen devoa ouz-in, hen deuz pæct eur banne d'in, « ha me goude d'ez, hag hen goude d'in, ha setu... »

« Mes, Aotrou Kure, diwar an dro-ma ne gaffot mui « roudon ma zreit eun hostiliri ebed, pe me a c'houf- « lenn koll ma ano mad. »

« Ra vezo greet, Yann ervez ho komz. Kena- « vezo! Nozvez vad d'eoc'h! »

Y.-K. KERZALE, beleg ar Zalet.

(Eur pennad all eur wech all)

BUEZ SANT SAMSON.

(TREDE PENNAD.)

Samson o veza eta deut da veza abat pe mestr er gouent a renaz er stat-ze eur vuez ken santel a ma terec d'ar gark huel a zougue. He garantez euid ar beorien a ioa dreist muzul; rei a reaz urs da ober da guement paour a deuje da dou an or, eun aluzen benag braz pe vian. Eun deiz ne voa netra da rei da eur paour a ioa deut da guichen. Pe tra ober? Samson ne voue ket pell var var, goude hemen a reaz rei d'ar paour-ze kement tam mel a vije cavet er c'hennio goenan: Antronoz ar c'hennio nou-ze a voue cavet leunoc'h eghet biscoaz, rag Doue a falvez d'ez-han diskuez dre ar burzud-ze, pegement e plije d'ez-han an aluzen a ioa bet gret. Gousgoude dre ma plije calz da Samson beva pell euz an dud en he bart he-unan, e teu, en eur ober trivec'h miz d'ober dilez euz he gark a abat, evit mont da veva en eul leac'h a gostez, e kichen eur c'hastel coz couezet pell a voa en he boull, hag e pez-leac'h e veve ive c'hoaz pevar euz he relijuzed. D'ar sul vintin ebken ez e d'ho golet, evit guellout lavaret an oferen en ho chapellic vian.

Tremen a eure eun nebeud bloavechou en toul distro-ze, ha petra benag m'az-oa henvelloc'h he di pe he gabanen euz ti eun den maro-eghed euz ti eun den beo, cousgoude e cave en-han he blijadur hag e rea anez-han he varadoz var an douar. Biken n'en dije dilezet ar gabanen-ze, anez-ma-teuaz-an dud d'hen dizolo. Ar brud a ioa a Samson a ioa calz re vraz evit ma helje chom eno e peoc'h. Araok mont di da chom en doa prezeguet en Irland, hag e peb-leac'h he sermoneioù o doa laketao da redeo. Savet e voue zoken eur gouent er vro-ze a zougue he hano. Samson a grede d'ez-han e c'helje beva eno e peoc'h, dianavezet gand an oll; mez brud ar zent a ia ato e peb-leac'h a dreuz pe a hed, dre an or pe dre ar prenest. N'euz mar ebet eun Escop euz a guichen en doa diguemennet d'an holl veleien euz he escopti en em zestum en eun ti braz evit tremen eun devez benag er beden, hag evit en em glevout gantho var meur a dra e kenver gouarnamant an escopti. An aotrou'n escop a reaz clask Samson evit dont da brezec d'ar vandenad beleien-ze. Samson her greaz gand calz a ners, a zouster hag a volesti. Goude e voue anvet abad en eur menec'h-ti-vraz a ioa bet savet gouech-all gand Sant Germain er vro-ze.

Mez Doue a dlie c'hoaz ober brezel d'he humilité. Eun deiz, etre m'edo er beden en iliz he gouent, an Ebestel S. Per. S. Jacek ha S. Ian, guisket gand ho ornaman-chou pontif, a zispacaz dirag he zaoulagad. Ar gonel euz an Ebestel-ze ne voa evit Samson nemed eun testen eus ar pezh a dlie c'houarveout gantho prest goude. Hag e feat, S. Dubrice, her greaz Escop, eb cousgoude rei d'ez-han Escopti e bet da c'houarn. Ar memez coulm ven a voue goelet o c'houarnizal azioe'h d'he ben pa voue great avieler ha pa voue beleguet, a voue adarre goelet o tisken var he ben etre m'edot o sacri anez-han Escop. Etre m'edo euz an aoter o lavaret an oferen, kement den a ioa en iliz a yelaz o fond-euz he c'hinou, he ziouscouarn hag he fri, evel flammou tan : en dro de ben e velet eur sclerijen gaer henvel-beo euz an heol o lu-guerni hag a hounde vech, e velet aliez pa vije oc'h ofe-renna, daou eal guisket e guen o servicha anez-han euz au aoter.

Gousgoude S. Samson ne voa c'hoaz nemed ken-escop, da lavaret eo n'en doa ken carg nemed da sicour an Escop all. Hoghen kement-ze, petra bennag ez oa dija calz evit humilité ar Sant, ne voa ket cousgoude avoual-lac'h hervez ar c'hoant en doa da labourat evit silvidi-ghez an eneo. Doue a dlie rei d'ez-han eur garg huelloc'h. Eun nebeud bloavechou goude, dar sul Fask, dioc'h an noz, eun eal a devaz d'her c'haont hag a lavaraz d'ez-han e rankje treuzi ar mor, mont da Vro-C'hall, ha disken e Breiz-Izel, e leac'h ma roje Doue d'ez-han eun escopti da c'houarn. Araok mont en hent, Samson a zeaz da lavaret kenavo d'he vam, d'he vouereb ha d'he guerent-all. Ahano ez eaz da gas sclerijen an Aviel en eur vro hanvet Savern, e leac'h m'ac'h adoret hoas doueou-faoz. Etre m'edo eno e roaz ar vuez d'eun den maro, hag e tennaz ar vro a anken, o tond da bel-

lat eur serpent braz a rea pell a ioa spouron an holl. Ober a reaz sevel eur gouent el leac'h memez m'edo toull ar sarpant bilimuz-ze, ha neuze e reaz clask he dad Ammon evit dont da c'houarn ar gouent ze. Goude eur mission ken talvoudec, e treuz ar mor a zo etre ar Frans ha Bro-Saoz, assamez gand S. Magloar ha S. Malo hag eun nebeud missionnerien-all. Gouzout a rent pe-ghen diez e vije treuzi eur mor ken rust var eur vagnic vian; gouzout a rent peghen pirilluz e vije tostât euz douar Breiz, goloet a c'berrek tro-var-dro. Mez n'euz fors : Doue ho galve ha neuze ar mor fuloret, an avel dicbadennet hag an oll pirillou assamez no dije ket ho laketao da jom adre. Douara a reont eta e Breiz-Izel, e tu an hanter-noz, en eur vrec'h-vor a halver c'hoaz birio Goujon-bian. A veac'h diskennet en douar S. Samson a zigouezaz d'ez-han erruout gand eun digentil euz ar vro hanvet Privatus, hag a ioa doaret da veza melconiet menbed. Samson a c'houlennaz digand an den-ze petra re poan d'ez-han. Privatus a respountaz ez oa e c'hrek goloet a torniez, hag ez-oa he verc'h kemeret (posse-det) gand an drouk-spered; hag ez oa eno ar pezh a rea poan d'ez-han hag hen lakea glac'hared. S. Samson o veza eat d'he di gand an digentil-ze, a bareaz dre eur burzud ar vam hag ar verc'h. Privatus, anaoudec mad euz ar c'hras a ioa great d'ez-han a guinghaz d'ar Sant peadra da sevel eun ti var he zouarou. Samson a guemeraz gand calz a blijadur ar pezh a guinguet d'ez-han, hag a zavaz eno eur gouent hag a voue hanvet Dol. En dro d'an ti-ze ez euz savet birio eur ger-vrao, hanvet ive ker Dôl, e leac'h m'az euz bet gonec'h-all eun escopti, evel m'hen livirin divezatoc'h. Eun nebeud am-zer goude, S. Samson a reaz sevel eur gouent-all en eul leac'h hanvet Lanmeur (Lan-Vraz). Lacat a reaz d'abat er gouent-ze, S. Magloar, he niz.

Goude-ze S. Samson araok distrei da Zol a reaz eur bale var an douarou a sco var ar mor. Tremena ra dre Plougaznou e leac'h ma kever birio eur chapellic, euz ar re vraz savet e kichen an aod etre ar Guerzi hag an Daje, hag a zouk he hano. Calz tud a Blouezoc'h a Blonjan, a C'harlan hag a Vontroulez a ia di da bardona. Ahano ar Sant a dreuzaz eur vrec'h-vor hag az-eaz da enezen Cal-lot hag goude da Gastel-Pôl. Goude beza evel-se great eun nebeud anaoudeghez gand ar vro, e teu var he ghiz da gouent Dol.

BODEUR.

YANNIC A VIL VICHER

PE KENTELLIU VAR CALS TRAOU HAG A YE, MAD DA C'HOUD.

KENTA KENTEL.

AN DOARE DA BREDERI UN DEN CLAAO.

Ar guete (adarre.)

EIL PENNAD.

Penaos cas an deen claan eus eur guete d'eun all? —

Penaos chenchidezhan he rochet? — Penaos he zomma?

Ac'hanta, Yvonic, eme Yannic pa oan distro, penaos em d'ad?

— Eun tamm em guelloc'h, abaoe ma-zeo diazezet en he vele boure bis, Beunos Doue dit, var map paour, emez-han, mill vad e peus græt d'inn oc'h va lacaat ama?

— N'em, hoc'het lavaret did.

— Ja, hag ar c'hoarion d'euz niobet?

— C'hoarion gant petra?

— O cas va zad euz an eil guete d'eghile ta. Pemp e bamp crog ennhano, a c'hoaz, hon deus bet mill boan.

— Pevar re e oac'h, d'az-unan e pije græt guelloc'h.

— Penaos-ta?

— Te a peus an doare d'a veza eun den gallouduz.

— N'em beuz ket aon rag eun all, evel a ouzoc'h Yan.

— Mad, neuze e tlejez beza lavaret d'ha tad: va zad, tolt ho troureac'h en dro d'am gouzoug, croazet ho taouarn, ha dac'hit peg mad. Te, neuze, a pije lakeet eun dorn var greiz he guen hag eun all eun tam huelloc'h evit coublon he zivesker, hag evelze e pije casset anezhan, en blijadur, betec he vele nevez, evel ma tong eur vam he c'hrudadur bihan.

— Mar, hije gouezet, Dals he nijmad a ben eur vech all.

— Eun dra all en deus græt calz labour deomp c'hoas.

— Petra-ta?

— Chench rochet d'ar c'hez coz; me gavé d'in e vije maro d'etrel hon douarn. Tri e oamp o trei hag o tistrei anezhiansunan adenne euz eun tu, hag eun all euz eun tu all.

— Ret eo caout nebeut a izin?

— Nebent a izin?

— Ia da, ne poa nemet lacaat an den claan var he goanvez. Lavaret dezhan sevel he zivreach plomm, cha-cha ar rochet e treuzec, al lae, hag evel ma tenner he c'holo d'var un disgloer, hag en doare-ze ive, ar rochet fresk a vize diskennet dre an hent ma oa pignet an hini fane.

— Mar carjac'h beza lavaret an dra-ze d'in deac'h.

— A me ouie e oas kenn divezat. Tomet e penz da viahana ar rochet araoc he lacaat d'an den claan?

— Oh! ia, ha tomet mad.

— Penaos?

— Oc'h an taan ta.

— Mez penaos oc'h an taan?

— Oh! Couls a n'eus fors piou.

— Guelomp.

— Astennet em beus anizhi var va diou vrec'h, hag he lakeet azioe'h eun tantad braz a daan.

— Me ouie e pije græt an dra-ze evel calz a draou all, da lavaret eo evel eun den a n'en deus guetet biscoaz ober netra.

— Va Doue! Yan, var be du oc'h savet er mintin ma? Choui zo grignous afad.

— Ia da, gant nebeutoc'h a daan e pije tomet anezhi guelloc'h. Ne poa nemet kemeret eur bod-lanpe eun lam paper, ha lacaat an taan ennan, tapout peg er penn d'an neac'h deus ar rochet gant d'a zaou zorn, ha goude beza losket ar manchon da goeza, he zrej azioe'h an taan buanna ma c'heljez. Ar penn d'an traon a deuje rac dal da c'hoeza ha da zigueri evel eur c'hloc'h, ha ker buan hag er lavaret, an domder a redche dreizi holl.

— Gouir avoallac'h a livirit.

— Ac'hanta guinaonec, er vee'h all e vouezi?

YVONIC AR BABILLER.
(Eur pennad all eur vech all)

LEVR AL LABOURER.

Buez ar Wenanen.

Ez an da lavaret buez ar wenanen, 1400
Ha da gomz euz ar mel a ra enn he rusken.
Evid al labourer a ziwar ar meziou,
Ar gwenan hell beza eur wammen a vadou.

C'houi choazo da ghenta eul liors a goste
Troet ouz ar sav-heol, pe war-zu ar c'hreiste: 1405
Eul lec'h war behini ne sko ket ann avel
Vit mac'h hellint loja ho sammou coar ha mel.

Na lezit na menn-gaour, na oan, na danvaden
Da sailha war ar bleun, da heja ar glizen!
Na lezit tost d'ezho nag ejenn nag ouner
Da flastra gand ho zroed ar lec'h glaz ha tener.

C'houi ho miro ive dioc'h pep loen danjeruz;
Dioc'h an aer, ar glazard, an tousec donjeruz;
Dioc'h bec lemm ar pennglaou, dioc'h bec ar gouc'peder
Dioc'h ar gwignel ho skrap en oabr euz an amzer, 1415
Hag ho c'hass, hep truez, d'he labousedigou
Ho gortoze naonec digor caer ho begou.

Ar gwenan en em blij e pleg eur feunteun skler
Tost d'eul lenn bevennet gant mann ha iefot tener,
D'eur c'houaz a red er prad e-mesk ar bokedou,
Ha dindan skeud dero savet dreist ho fennou.

Evit mac'h hellint caout, e creiz ann nevez-han
(Pa zigass ar mammou, ovid ar wech ghentan,
Ar re iaouank ermez da ghemer ho ebat)

Delion glaz da ziskuz, dour skler d'en em freskaat, 1425
E-creiz ann dour a red, hag e-creiz al lennou,
Taolit a-dreuz meio' braz, pe gwez, pe koz keffou:
Eno, vel war eur pont, ar wenanen glebiet

A zec'ho ouz an heol he diwaskel moeltret,
Mar befe bet tizet gand eur bar-glaou pouner, 1430
Pe gand eun avel cre bet talet enn eur ster.

Le Delaigier J. H. D. & C.

Hano ar Zent evit ar Sizun-ma.

- DILLUN, 18. C'HUEVREB. — S. Guevroc, abat.
- DIMEURS, 19. — Peden hor Zalver er Jardin Olivez.
- DIMERC'HER, 20. — Eus an deiz.
- DIZIQU, 21. — Ofis ar Zacrarnant.
- DIRGUENER, 22. — Cador Sant-Per en Antioch.
- DISSADORN, 23. — S. Per Damien, escop ha doctor eus an iliz.
- DISSUL, 24. — Sul ar Sexagesim.

An Abostol hini :

Va breudeur, a rafoz vad e c'houzanvit an dud diskiant, evidoc'h da veza fur oc'h unan. Ho gouzaon a rit zoken da ober sclavet ac'hanoc'h, d'ho libri, da aloubi ho tra, da goms rog ouzoc'h, d'ho fasata. Mez am eus oc'h he lavaret, rag me so bet re lent var ar poent-ze. Hoguen var an traou-all, mar o deuz hardizieguet, (evit comz evel eun den diskiant,) e vezin ken hardiz hag hi.

Hag Hebreanet int-hi ? Me a zo ive. Hag Israelited int-hi ? Me a zo ive. Hag a wenn Abraham int-hi ? Me a zo ive. Ha diskibiñ int-hi da Jesus-Christ ? Ha pa dlefen tremen evit eun diskiant, e liviria cre ez oun c'hoas muioc'h evitho. Muioc'h em eus labouret, muioc'h a daoliou am eus bet, aliesoc'h oun bet prizonet, aliesoc'h oun bet tost d'ar maro.

Pemp guech em eus bet digant ar iuzevien nao daol fouet ha tregont bevech. Teir guech oun bet scourjezet; eur vech oun bet labezet; teir guech em eus great pense; eun nosvez hag eun dervez oun bet e goulet ar mor. Alies oun bet e danger em beachou, e danger var steriou, e danger rag al laeron, e danger rag tud va bro, e danger aberz ar baianet, e danger er c'heriou, e danger er gouelec'hiou, e danger var ar mor, e danger abers fals breudeur. Bet oun dalc'h mad er boan hag er skuisder, heillet em eus alies, gouzanvet em eus an naoun hag ar zec'het, ar iunou stang, ar riou hag an divoer a zillad.

Ouspen ar poaniou-ze pere a deu a ziaveaz, ar zoursi am eus eus an oll ilizou a ro din bemdez nec'h ha treveil. Pion a so dinerz, ha ne d'oun-me ket dinerz evel dhan ? Pion so pouzlet da bec'hi, ha ne zevan-me ket gant ar c'hoant d'he zavel ?

Mar deo red en em fougueal, n'en em fouguein nemet eus ar pez am eus gouzanvet. Doue Tad hon Aotrou Jesus-Christ pehini a so benniguet da viken, a voar ne lavaran ket a c'heier.

E Damas, an hini so gouarner eno aberz ar Roue Aretas, a lakea dioual kar evit cregui enhop. Diskennet e vouen en eur baner dre ar prenest a hed ar voguer, hag oun tec'het evelse a dre he zaouarn.

Mar deo red en em fougueal, (ar pez gouscoude ne dal nemeur a dra,) e tevin brema da gomz eus ar pez en deuz Doue diskuezet ha relevet din. Anaout a ran eun den, diskibl da Jesus-Christ, hag a voue, brema ez eus

pevarzeg vloas, savet betog an tredo astach eus an Eav. (Ne ouzon ket pe gant he gorf pe ep he gorf e voue savet; Doue epken her goar.) An den-ze, her gonzout a ran, (pe gant he gorf pe ep he gorf ne ouzon ket, Doue her goar;) an den-ze a voue savet betog ar baradoz, hag a glevas traou euz, traou ker caer, ma na ell ket eun den ho disclerja. Evit eun den evelse ec'h elfen en em fougueal, hoguen evidon n'en em fouguein tam nemet em poaniou em zrubuillon. Gouscoude ma false din en em fougueal, ne venn ket diskiant, rag ar virionez a lavafen; hoguen ne ran ket gant aoun na denfe unan bennag d'am istimout en tu all d'ar pez a vel enhon, pe a gleo lavaret ac'hanon. Hag ive gant aoun na deujen d'en em zavel re huel abalamour d'an traou bras so bet revelet din, Doue so salvezet dezhan e vije broudet va c'hig gant eal satan pehini a deu d'am fasata. Rag-ze em eus pedet Doue teir guech da gas ar brout-ze diouzin ha Doue en deus respontet din: Va gras so avoalc'h evidoc'h; rag va gallout en em ziskuez guelloc'h en dud diners. Gant plijadur eta en em fouguein em zrubuillon, evit na chomo ners Jesus-Christ enhon.

(Eil lizer S. Paul d'ar lopl a Gorinth. xi ha xii.)

G. M.

Pouez eun nebeut brazun colo.

Bez 'ez oa en eur c'hastel eun den pinvidig ha galoudeg bras. Pa zea er meaz euz he gastel a voa ato evit ober distruch e douarou he amezeien, en tiez hag er c'heriou, evit mont da vrezelecaat pe da c'huilla ar veachourien. Ker criz ha ken disacret oa, ma ne voa mui hevel oc'h eun den. N'oa netra vad en he galon, nemet ma care c'hoaz eun nebeut he c'hreg. Houma a ioa eur vaquez vad ha dizroug, hag a dre-mene an noz hag an deiz o vouela var dizurziou he fried, hag o c'houlenn he zistro oc'h Doue. Caer en devoa an den eriz-ze ober stad anezhi, ne alle caout laouenediguet ebet keit ha ma hier guele oc'h ober torfejou evel a rea.

Eun nosvez, er goan, epad ma rea eun amzer sponstus gant ar glao hag an avel dirollet, an Itron a voa e corn he oalet dirag an tan. An aotrou ne voa ket c'hoas distro eus al leac'h ma voa eat en deiz-ze. An itron a scrije o clevet an amzer, an avel hag ar glao o iudal hag o stracal, hag e pede. Clevet e voue unan bennag o skei var an or, ha souden e teuas eur mevel da lavaret d'he vestrez e voa e kichen an or daou vanac'h gleb teil, dare da vervel gant an naoun hag ar riou. Dianket oant er vro c'houez-ze hag e c'houlennet repu evit an noz ha pa vije e corn eur c'hraou.

An itron en em lakeas da grenn. Gouzout a rea peguement e cassea he aotrou ar venec'h, ha ker sentuz oa, ne grede ket zoken ober ar vad ep he otre. Gouscoude, penaus cas en ho zro an daou vanac'h paour-ze ?

Ar mevel a velaz ervad petra lakea nec'het an itron,

hag a lavaras dezhi. An aotrou ne vouezo netra; an daou vanac'h-ze a iell kuit varc'hoas mintin mad. Neuze an itron a gouharas d'he mevel ho diguemeret hag he c'huillad e corn ar c'hraou.

A veac'h oant errouer ma voue clevet ar c'horn o vouela, ha kezes o tout d'an daou lam. Ar mestr o a zigouez er guez. Teleur a reaz he zillad goadog evit guisca eur zac seiz caer ha tom, hag ec'h azezas oc'h an daol eleac'h ma zoa eur goan vad oc'h he c'hodal.

An itron a azezas en he guichen. Guisket caer oa ive, mes trist braz oa, ha ne zebre tam. Huanada a rea, ha beradou daelou a rede var he divoc'h.

— Petra c'hoare ganeoc'h ? eme an aotrou.

— An itron ne lavaras guer.

— Petra ! aoun oc'h eus bet na vijen maro dindan ar bar, goal amzer-ze ? Oh ! n'o pet ket a nec'h; me n'em eus ket aoun rag pol-goz. An itron a zalc'he da vouela. An aotrou a fellas dezhan gouzout petra rea anken dezhi.

— Aotrou, emezhi, gouela a ran abalamour epad ma oun eus-ni ama kement a c'hoanteomp, ez eus re all hag a zo en dienez a bep tra; epad ma zeus ama tan mad oc'h hon toma, ez eus re all o crena gant ar riou; epad ma reomp-ni ama cher vad, ez eus re all o vervel gant an naoun.

— Pion a so dinerz, ha ne d'oun-me ket dinerz evel dhan ? Pion so pouzlet da bec'hi, ha ne zevan-me ket gant ar c'hoant d'he zavel ?

— Daou vanac'h, aotrou, so deut ama da glasc repu, hag a so du-ze er c'hraou.

An aotrou a reaz eur min an divalaoa. Menech'l emezhan tud didalvez, lonkerien hag a rafe cher vad divar va c'houst, mar gallent !

— N'o deus goulennet nemet disc'hlaog hag eun neheut plouz. An aotrou a c'halvaz he veyello.

An itron en em lakeas da grial: en hanv Doue, n'ho lakit ket or meaz ! Na rit ket a zroug dezho !

— Bezit dinec'h, eme an aotrou, roet e vezo bouet dazho: toma a raint, hag ebat or bezo gantho. C'hui velod hag e lavaras ho digas dirazhan.

Gouscoude pa devaz an daou vanac'h, ar guel anezho a gassas kuit ar c'hoant caketal en doa an aotrou. Alleoudouet pe ar c'homzou divalo en doa sonch da lavaret, a chomaz etre he zent pe var beg he vuzello. Sevel a reaz en he za d'ho diguemeret, rag an ear a zantelez anezho, dreist oll eus an hini cossa gant he vleo guenn hag e zrem stenet dre ar binjen, her scoas kement, ma na elle ket miret da gaout doujans evitho.

Lacat a reaz ar manac'h coz en he guichen oc'h an daol ep lavaret guer. Hoguen ar manac'h en em lakeas dioc'htu, ep aoun ebet, da gomz a Zoue en ti-ze eleac'h ne gomzet nemeur anezhan, hag eleac'h ne zonje nemeur enhan nemet an itron.

An aotrou a jome sioul. Silaou a rea, hag e selle oc'h an itron; houma a ioa croaziet he daouarn gan-

thi o clevet comzon Doue, hag a lavare outhi e-unan: « Bennos Doue d'an hini a zilaou. »

Goude coan, an aotrou a guemeraz eur c'houlouen, hag a gassaz an daou vanac'h da gaera cambr a ioa er c'hastel, evit bo lacat da gousket e daou vele alaouret. An daou vanac'h avad a lavaras ne gouskent morse nemet var ar c'holo.

Neuze an aotrou a ziskennaz he-unan d'ar c'hraou hag a zigassas gantha eur zam colo da lacat dezho var leuren ar gambr.

Calon an aotrou a ioa evel rannet, hag hen o lavaret d'ar manac'h coz: « Va zad, me garfe distrei oc'h Doue, mes kement a bec'hejou am eus great, ma ne allan ket esperout caout pardon anezho.

Ha pa ve eme ar missioner, brassoc'h niver ho pec'hejou eguet hini an treaz eus ar mor, pe ar beradou glao a guez eus ar c'hoabr, pe ar stered eus an env, Doue ho fardonfe deoc'h mar o pefe eur guir gueuz, eur guir glac'har d'ezho. Setu perag ar pec'her ne ra nemet caledi he galon, n'en deuz digarez ebet, setu perag en devezo eun dizesper hag a hado ato.

Neuze an aotrou a ieas d'an daoulin, a gofesseaz, hag a scuillas kement a zaelou ma c'hlibiaz ar plous var bere e voa daoulinet.

Ar manac'h, goude beza cofesseat an aotrou ha frugarekeat Doue, a gouscas. Dre he gousc, setu e cave d'ezhan beza dirag barnediguet Doue. Ar Barner braz a zalc'he en he zorn eur valans evit poueza an droug hag ar mad. Mont a rea da varn eun ene, hag an enez e oa hini an aotrou eus ar maner-ze.

An droug-speret sounn he benn ha sur eus he daol a gave dezhan, a dolaz en unan a scudello ar valans eur bern scrijuz a bec'hejou: an Alez-mad a zerraz ho daoulagad gant an euz o devoue; an enez e a loscaz eur glemaden.

Neuze Ael-Mad an ene-ze a dosteas. Tostat a reas caer ha didrouz an ael-ze pehini a laca ar c'beuz e calon an den, an daelou en he zaoulagad, an aluzen en he zorn, ar beden var he vuzello. Tostaat a reas, hag e voa ganta ar bruzun colo en doa glibiet an aotrou gant he zaelou. Ho zeleur a reaz er scudel all eus ar valans, hag e sajont ar beac'h pec'hejou.

An ene voue saveteet.

Antronoz pa zavaz ar manac'h, e cavaz an oll mantret er c'hastel.

Goulen a reas perag e voa mantret an oll evelse.

An aotrou a voa maro epad an noz.

(Tennaet eas ar gazetenn *Revue de la Presse*.)

KELEIER.

Ar lestr braz, hanvet *Great-Eastern*, a behini e comzer pell zo, a dle dont, ep manc, a leverer, da zigas ha da gas tud etre Brest hag an Americ epad an *Exposition*.

Setu ama hano an unnek departamant a Frans eleac'h ma zeus muia tud :

Sein.....	2,150,916.
Nord.....	4,302,041.
Sein-Izela.....	792,768.
Pas-de-Calais.....	744,777.
Girond.....	701,855.
Rhon.....	678,648.
Finister.....	663,485.
Costez-an-Nord.....	641,210.
Son-ha-Loer.....	600,006.
Loer-Izela.....	598,598.
Il-ha-Vilen.....	592,609.

An den *venerabl* Beneat eus a Urbin, a urz ar gabucinet, a dle beza bet discleriet *eurus*, an dec a vis c'huevrer.

Ar re o defe c'hoant da vont da Bariz evit ar mare ma vezo dispaket eno da ziskuez kement tra gaer so er bed, a ve marteze contant da glevet eun dra bennag divar benn kementse.

An *exposition* a zigoro gant miz ebrel, hag a zerro gant miz here. Padout a rai eta seis mis. An ostiliou pe benviachou evit a bep seurt labourou, evel eler, dornezet, nizerezet, mederezet, etc, a vezo diskuezet eul loden anezho bep pemzeg dez.

Al loenet a vezo ive laket da ziskuez, eur rum bep pemzeg dez, ha setu ama penaus :

E miz ebrel. Ar pemzeg dez kenta : denvet lard. *An eil pemzeg dez* : loenet lard.

MAE. — Kenta pemzeg dez : Saout. (BIOC'hennet.) *Eil pemzeg dez* : Denvet gloanec.

EVEN. — Kenta pemzeg dez : kezeg labour. *Eil pemzeg dez* : ier, onidi, etc.

GOVERE. — Kenta pemzeg dez : Colect. *Eil pemzeg dez* : Kezeg a briz bras.

EOST. — Kenta pemzeg dez : Chass. *Eil pemzeg dez* : Ejenet labour.

GUENGOLO. — Kenta pemzeg dez : Moc'h. *Eil pemzeg dez* : Ezen, mulet, kezeg mul.

HERE. — Kenta pemzeg dez : Chatal lard. *Eil pemzeg dez* : Loenet a bep seurt, don pe da zonaat.

Guelet a rer avechou er foariou, er marc'hajou, er c'hæriou, hag ive var ar meaz furlukinet hag en em laca da brezeg. Guelet a rer tud bodet en dro dezho, digor ho guinou gantho o silaou ho c'henteliou, ha pe seurt kenteliou? Ar furlukinet-ze a brezeg peurlissa lezennou nevez, pe kentoc'h, a brezeg alies a enep lezen Doue hag ive a enep lezennou an dud. Sacha arc'hant dre eur furlukinez bennag; ober goap eus ar re ho zilaou hag ho zromplâ, setu petra glascont. Ar botred vad a vez rog, sounn ho fenn gantho; gouscoude gant eur guer, eun den hag en deffe eun tamig hardizieguet, a stancfe crenn ho guinou dezho.

Var an dachen varc'had e kær X... e voa eur furlu-

kin evelse oc'h ober he brezeguen. Comz a rea huel ha ter bete dihalana. Evel eun hed guenan oa bodet tud var he dro. Etre cals traou all e lavare : Ni a zo tud ha ne ket sclavet omp; oll emamp e frankiz; oll omp kement ha kement, ken huel ha ken huel; oll e talomp an eil keit hag eguile. Caout a dleomp oll frankis da ober pephini evel a garo. Hag evelse da ober petra serjantet polis? da ober petra archerien? Ha ne ket coll arc'hant a rer oc'h ho faea? Ha ne dompni ket gwest da veza tud honest ep-d-ho?

Etouez ar re a voa oc'h he zilaou, eun den iaouanc divar ar meaz lem he lagad, hag ar musc'hoars var he vuzellou, a dosteaz oc'h ar prezeguer, hag a lavaraz dezhan :

— He! potr chentil, claoustre c'hui oc'h eus lezet oc'h alc'huez e dor ho cambr!

— Petra livirit? Eme ar furlukin.

— Me zo sur oc'h eus ancounac'h oc'h alc'huez!

— Ar furlukin a gassas buan he zorn d'he c'hodel, hag a lavaraz : N'em eus ket, ema va alc'huez ganen.

— Petra! eme an den iaouanc, oc'h alc'huez so ganeoc'h! alc'huezet oc'h eus ho tor? Petra! aoun oc'h eus ta rag al laeron! ha mar oc'h eus aoun rag al laeron, petra eo deoc'h dont da gana bourdou ha canticou deompni ama, o crial aze n'eus ket ezom a zerjantet polis, n'eus ket izom a archerien?

Eno ec'h ellit credi, e savas neuze c'hoarz hag hu var ar furlukin, hag hema ne zavas mui c'hoant gantha da brezeg eno evit en deiz-ze. G. M.

PRIZ AN ED.

KEMPER. — 9 C'huevrer.

<i>Priz ar c'hant liour.</i>	
Guinis....	46 lur, 07 c.
Segal.....	40 lur, 24 c.
Eiz.....	40 lur, 24 c.
Ed-du....	7 lur, 40 c.
Kerc'h....	40 lur, 06 c.
Avalou-douar	4 lur, 50 c.

MONTROLEZ. — 26 *guenv.*

<i>Priz an hectolitr.</i>	
Guinis....	24 lur, 07 c.
Segal.....	43 lur, 83 c.
Eiz.....	42 lur, 40 c.
Ed-du....	43 lur, 27 c.
Kerc'h....	9 lur, 74 c.
Avalou-douar	9 lur, 00 c.

PONTNABAT — 7 C'hue.

<i>Priz ar c'hant liour.</i>	
Guinis....	46 lur, 25 c.
Segal.....	44 lur, 04 c.
Eiz.....	40 lur, 63 c.
Ed-du....	8 lur, 43 c.
Kerc'h....	40 lur, 50 c.
Avalou-douar	4 lur, 50 c.

BREST. — 4 C'huevrer.

<i>Priz an hectolitr.</i>	
Guinis....	24 lur, 33 c.
Segal.....	24 lur, 48 c.
Eiz.....	42 lur, 89 c.
Ed-du....	40 lur, 58 c.
Kerc'h....	40 lur, 66 c.
Avalou-douar	7 lur, 76c.

Ar Gerant: AR. DE KERANGAL.

Kemper, moulet gant AR. DE KERANGAL, Moulter an Escopti.

FEIZ HA BREIZ,

KELOU A BEP BRO, HA KENTELIOU VAR BEP TRA,

DIGASSET BEP SUL

Da guement Christen a goms ar brezouneec.

Eun Abonnamant d'ar Gazeten à goust:

Evit eur bloas.....	DAOU SCOUET.
Evit c'huec'h miz.....	EUR SCOUET.
Evit tri miz.....	C'HUEC'H REAL.
Eur gazetenn ebken.....	DAOU VENNEC.

Ar baecamant a dle beza great araog caout ar gazeten.

ALIOU.

Ar scrijou a ve c'hoant da lacat er gazeten a dleer da adressi oll d'an Aotrou MORVAN, Beleg e Kemper.

Ar paeamanchou a dleer da adressi d'an Aotrou SALAUN, ebken. An abonnamant a guemerer e ti an Aotrou SALAUN, librer, ru Kereon, e Kemper.

KEMPER, 23 C'huevrer 1867.

Ne glever coms brema, couls lavaret, nemet eus ar veladen vras a dle beza e Pariz er bloa-ma hag a c'halver *Exposition universel*. Eno e vezo guelet kement tra dibaot a so var an douar. Peb bro a zigaso ar pez e dens a gaera da ziskuez. Beteg an Tad Santel ar Pap a zigaso ive he bez, dioc'h ma leverer. Lavaret a rer e tigasso eur c'hav, eur pennad cav great gant coat, hag a so dindan ar guær a Rom, hag a hanver *catacomb*, eleac'h m'en em denne guehall ar gristenien evit pidi, evit clevet an oferen, hag eleac'h ma c'henterret ar verzerien. Ar pennad cav-ze so peinet ha kempenet en hevelep doare ma zeo henvel tre oc'h ar guir gaviou so dindan ar guær a Rom.

Guelet e vezo ive eun ti great oll gant houarn. Ar muguierou, en houarn evel an nemorant, a vezo cleuz evit gallout cas dreizho ezen dom da doma an ti oll pa vezo c'hoant. Hoguen ne zonc'h ket din e ve nemeur eus ar re a lenn *Feiz ha Breiz* hag a ve e sonch da zavel tiez houarn. Calz anezho zoken, me voar vad, ne daint tam ebet d'ar veladen vras da Bariz. Mes ep mont eus ar guær, pep den a ell guelet caeroc'h c'hoaz evit a vezo guelet eno.

Doue a ro da ziskuez d'an oll, a laca dirag daoulagad an oll en *Exposition*, an oberou eus he zaouarn hag a so mil guec'h caeroc'h evit ar pez zo savet dre ijin an den. Gouscoude chom a rer souezet dirag an traou ijinus great gant an dud, mont a rer a bell da zellet outho, ha ne brijer ket sellet oc'h oberou Doue.

An den n'en deus nemet sevel he zaoulagad, hag e c'hell guelet an heol, al loar, ar stered, an oll astrou o trei azioc'h he benn. N'en deus nemet sellet, hag ho guelle oll o tremen dirazhan evel eur vanden zoudardet pephini en he renc, pephini d'he dro, pephini gant ar vent hag ar sclerdet roet dezhan gant he Grouer. An envou, eme ar scritur, a deu da ziscletria gloar an Aotrou Doue; an oabl a ziskuez d'comp

pe guer braz eo an oberou eus he zaouarn. Peleac'h ec'h alfe an dud gant ho oll ijin, ober netra ker glet hag an astrou-ze?

An douar ive gant he bliennou, gant he veneziou, gant he derguin, gant he stankennou, gant he steriou, he voaziou dour red, gant he vez hag he oll blant, a laca dirag daoulagad an den, ma car evesaat outhan, eun daolen ha ne rai morse an dud eun all henvel outhi.

Hag ar mor? Piu a ziskuezo d'ar re n'o deus morse guelet, eun daolen evel a ziskuez ar mor braz, dreist oll pa vez fuloret? Caer oc'h eus sellet, ha cas ho sell hirra ma c'hellit, ne velit nemet an houliou evel kern menezion an eil o vont varlerc'h eguile, hag avechou an tarziou-ze, guenn-cann gant an eonen, a zao beteg an oabl hag a ve lavaret o defe c'hoant d'en em zavel beteg an env, ha gouscoude pa vezont goassa en ho c'hounnar, pa zonc'h deoc'h ez eont da zilamet da lonca an douar, ho guelit o chom a za e kichen eur c'hreunen-treaz! Ho C'hrouer en dens difennet outho mont larcoc'h. An env, an douar, ar mor, setu eno eun *Exposition* lakat gant Doue dirag daoulagad an oll. Ne evesaomp marteze tam oc'h an traou-ze, abalamour ma ho guelomp bepret. Gouscoude petra eo oberou an dud e kichen an traou-ze?

Mad eo a dra zur guelet ha meuli an traou ijinus great gant an dud; hoguen mad e ve ive evesat oc'h an oberou caer-ze lakeat gant hor C'hrouer dirag hon daoulagad, hag he veuli hag he drugarecat da veza ho roet d'comp nos deiz da ziskuez. G. M.

Rom. — Hon Tad Santel ar Pap a so ato cre he iec'h, hag abaoe ma zeus deut eun dervez amzer vras bennag ez a var droad da vale dre ruiou Rom ha var dachen Menez Pincio. Eun escop coz ha cabac'h o veza eat eun dervez d'he gaout, Pii Nao a lavaraz dezhan :

— Petra, beac'h oc'h eus o vale, hag e teuit c'hoas d'am guelelet ?

— Tad Santel, eme an Escop, plijet gant Doue lamet diganen va divesker, gant ma tale'ho mad ho ré-hu. Ne c'houlennan ken nemet ma chomo ganen va zeod evit ma c'hellin lavaret deoc'h p'eguement ho caran.

An Tad Hofbaner, euz a urs Sant Ligor, so hano da ganoniza. An Tad-ze n'en devoa nemet nao-bloas pa gollaz he dad. He vam, o tistrei eus ar vered an deis m'oa casset he fried d'an douar, a lavaras d'he map : Na vouelit ket. Ne viot ket minor, rag cavet em eus deoc'h eun tad ha ne deui ket ar maro d'he lamet diganeoc'h. « Sellit, emezhi, en eur ziguere cambr an hini maro, setu aze an Tad a dleit da garet ha da zervicha iviziken. » Ar vam a ziskueze d'he map eur grucifi vraz, hag ar paotr a teas d'an daoulin e treid ar grucifi-ze, hag araog sevel ac'hano e reaz outhan he unan al le da zenti ato oc'h he dad Jesus crucifiet. Honnez e voue ar c'henta camed a reas varzu ar zantelez.

Nevez maro ez eus e Rom eur Zouav dioc'h costez an Holland; he varo so bet skuerien meurbet. Eun dudi oa he zantimanchou christen hag he zentidiguez oc'h bolontez Doue epad he glenved-diveza. En he alter zoken ne gomze nemet a Jesus, a Vari, euz an iliz hag euz a Bii Nao. Ar beleg a ioa var he dro o veza lavaret dezhan: Ho pet fizians, va mignon, guelelet a reot c'hoaz ho pro ! Oh ! ia, emezhan, hen esperout a ran, hag enruzen em gavan da vervel evit ma he guelin kentoc'h. Pa voa maro, e voue cavet eur cilis hir en dro d'he groaslec'h. Den ne vouie e tougue ar cilis-ze. Lezet e voue gantha, mes he gamaradet o deus casset he zillad soudart d'he vam.

Setu ama hag a ziskueze e vezer ato ber dioc'h eur penn bennag pa zear a enep Doue, caer a ve caout speret hag ijin ha dresa mad he droiou. E Rom ez eus lazet eur Zouav. An torfetour en doa great ar pez a ranket evit ober he daol ep beza anavezet, evit gallout tec'het buan ep beza guelelet. Eat oa da c'hortoz ar Zouav en eul lec'h distro, e kichen eun ti a voa digor an or evit ma c'halje lamet enba goude m'en divije roet taol ar maro d'ar zoudart keaz. An ti-ze en doa ive eun or adre dre behini e tlie tec'het ep ma c'houesje den pelec'h e vije eat. An diou zor a voa eta digor; mes petra c'hoarvezas ? Epad m'edo an torfetour o c'hortoz he zen, unan bennag a deuz en ti dre an adre, hag a brennaz an or. Ha pa lamas an den criz en ti goude skei ar Zouav, ne allas ket mont er meaz dre an tu all, hag e voue croguet enha eno. Pa edo zoken oc'h ober he dorfet en em gavas dres eur vaouez da zont a enep, hag houma hen anavezaz hag hen diskuezas en ti d'an archerien a voa diridet ep dale var al leac'h. Lod a lavaro marteze e voa digoezet an dra-ze dre zarvout; mes ni, christenien a c'half an darvoud-se eun taol eus a brovidans Doue pehini ne fell ket dezhan lezel ato an dud fall, an dorfetourien da vale di-gasti.

PARIS. — Eur micherour iaouane eus ar Sax, deut da

Bariz evit en em bleustri var he vicher ha deski ar galleg, en deus kuiteat he fals religion evit dont d'ar guir ilis. Anzolanite so het great e chapel ar vicherourien iaouane. An den iaouane en doa het e Pariz an heur d'en em gaout gant guir galloket, euz he vro. Ar re-ze, onspen ar sicouron a reont dezhan evit he vicher, a laboure ive da zavetei he ene. Silaquet en deus ho monez hag en deus troet kein d'he fals religion.

LYON. — Brema ez eus eun nebeut, eur zervicherezh a so deut da zigas mil lur evit diner Sant Per. Ar vaouezvad-ze a roe evelse kement e doa; ar pez e doa destumet epad meur a vloavez dre galz a boan hag a skuisder. Ne deo ket falvezet dezhi rei he hano. Lavaret a rea e voa avoalc'h evithi gallout gant he zamig arc'hant, rei eun nebeut sicour d'hon Tad Santel ar Pap en he izom.

TOULOUZ. — Ar skuer vad a gaf tud d'he heuilla evel ma caf ar skuer fall, eme gazeten Toulouz. N'eus ket pell e lavaremp penauz eun den hag en doa c'hoant da vont da zervicha ar Pap, lia ne alle ket mont, a zigasas pemp cant lur evit lacat eun all en he leac'h. Abaoue meur a hini o deus great evelse. Bete merc'hed zoken o deus roet ar skuer. Evelse e comzemp er sizun dremenet eus eun demezel eus ar Belgic hag e doa roet peadra da zerc'hel eur zoudard en arme ar Pap, hag e lavaremp on divije caret e vije bet an demezel-ze eus a Frans. Hoguen setu ama brema eur vaouez eus a Frans hag a zigas pemp cant lur da Doulouz evit lacat eur zoudart en arme ar Pap, en eur lavaret penaus pa na ell ket evel maouez mont he unan d'an arme, e fell dezhi da viana ober ar pez so en he gallout evit servicha vikel Jesus-Christi.

(Tennet euz ar Sizun Catholic).

BRÉ-ZAOZ. — Eun dra scrijuz eo guelelet p'eguement a dud a so brema e Londrez o c'hilaouiri gant an naoun ha gant an dienez. Er gvar-ze ez eus da nebeuta daon c'hant antercant mil den, goazet, merc'hed, bugale, ha ne vevont nemet divar an aluzen. Epad an amzer ien a so bet, ez eus maro cals anezho gant ar riou. Er parrezion catolig ez eus het savet cals arc'hant evit sicour an dud izomeg n'eus fors eus a be religion e vijent. Hoguen siouas ! Kementse a voa c'hoas ber. Ma vije bet Londrez oll catholig, ne vije ket guelelet a drubiellou evelse enhi. Caer o deus ar re so er meaz eus ar guir ilis sevel arc'hant ha rei en ho guis sicour d'ar beorien, ar beorien a varf gant an naoun. Ne deus nemet ar guir garantez hag a oufe sicour ar paour evel m'eo dlet, hag ar guir garantez n'ema nemet er guir religion. G. M.

EUR SKOL-NOZ

(C'HEUC HVET PENNAD)

« En distro d'ar presbital e kontiz ma gweladenn d'an aotrou person, peini en em lakeaz da c'hoarzin, hag a lavaraz; « O ! ia, Yann a zo eul lapouz ! Fin a vezo an

« Aotrou Doue, mar gell tapout aneza, eun deiz, en he baradoz ! Ha Yann a raio d'eoc'h promesaou kaer ar pezh ar garfot, ispisial mar sant gallout dre enno no sona d'eoc'h ho yalc'h. Me a zo bet paket gan-t-ha a vije Mes'gorozit, ne vezot ket pell hag ec'h anaveffot ma den. »

« Abarz eur miz goude me a anavezé mad Yann. Setu ama e berr gomzou he vuez: D'ar zül vintin Yann a laboure attao beteg kreistez pe war-an-dro. En he spe-red e vize labourat epad an deiz evid rapari an amzer golllet er penn kenta euz ar zizhun; mes goude lein e deue eur c'hamarad beag da glask aneza, pe hen a yee da glask he gamaraded, ha souden e tigre ar goel gan-t-ho er c'henta tavarn a gavent. Ac'hanno d'an noz hag en noz e yee aribannac'hou en dro, mar bize arc'hant er godellou. »

« Hag an oferenn ? Hag ar gousperou ? »

« Ia da ! Yann a voa chalet gan oferennou ha gan ar gousperou ! A-wechou e yee d'an oferenn beure (vintin) pa n'hen divize ket a brez labour, ha pa zante kavont, esoc'h a ze dre enno he gamaraded, he genlonkeren. »

« Pa n'hen divize ket Yann lonket rac'h he zizhuvez d'ar zül, e tale he d'he feurlonka d'al lün. Rag d'al lün vintin ne vize ket ezet, yac'h a-voalc'h, na re c'hoanteg evel se da labourat. Mont a ree eta d'an hostiliri da glask eur bann evit gwellaat d'ezo, evid en em barea, ec'hiz ma lavare. Mes eur bann na ree nemed kommans ar gwellaenn; ha setu e vize kemmeret daou. An daoua yee da dri, an dri, da bewar, ha setu Yann adarre ruz he bean, besk he deot ha boru he gazeg. »

« Ar meur a zeue ha Yann ne vize ket c'hoaz krog en he labour ! Klavoc'h en em gave c'hoaz d'an deiz-se eged d'al lün, hag eur bann hen divize sür greet kals a vad d'ezo. Mes allaz ! gwenneg ebed mui er godel, hag an hostiliri na roent ket e termen, ha setu e renke ar paour kez Yann chom er gær da dermat gan he boan ha da deuffat ebarz el ludu. D'ar merc'her, oc'h en em gavout gwelloc'h, e kroge en he labour. Red mad a vize, pe mouga gad an naon. D'ar vroeg ha d'ar vugale e vize roet tammou-boned gad an dud, mes da Yann nikun ne gase ginaouad. Den n'hen devoa truez out-ha. »

« Mes, a lavarffot, « ma vize lonket rac'h d'ar zül ha d'al lün, penaoz ec'h allet kaout netra en ti van ar zizhun ? »

« Roet e vize gan lod e termen d'ar vroeg, gan truez out-hi hag ouz he bugale, bara ha traou all, ha da zül, pa hen divize Yan touchet he bæ, ar fourmisouryen a zeue da glask ho arc'hant. Keit ha ma vize reud he c'hodel, ma den a bæe proprig a-voalc'h. Ne gommanse termat nemed pa gave he vizied goeled he c'hodel. »

« Ne lavarin d'eoc'h netra eur ar goall vuez a vize greet d'ar vroeg paour ha d'he bugale gan ma den, pa vize hen mezo. A-liez e renke hi gan he daou vugel skarza an ti d'ezo, pa errue er gær, krevet gan he gorfad. Ha neuze e vize klevet ar mallozou, ar goall-bedennoù, ar sakreou hag al leoudouejou o ruilla dre al lochem

(Yann ne vouie ken pedennou), ken a ranke an amezeyen dont a-wechou gan bizyer ha ferc'hyer da zerra d'ezo he c'hinou, pe a nez n'ho divize bet peoc'h ebed gan-t-ha da gouskef. »

« Setu aze, va mignoned ker, petra a voa ma den. Oc'h ober he histor, ha n'em beuz-me ket greet histor meur a ini ? Ne lavaran ket e vez kemment labourer sül a zo envel en oll ouz Yann, ken droug, ken kasauz, ken dizoue ha Yann. Koulskoude, evid-om-me ne roffenn ket pemp kwenneg evid kroc'henn ar gwella anezo. Ne garfenn ket dongen war ma c'hein eur ze greet gan kroc'henn an honesta euz anezo : aon em beffe, ha gan rezon, ne teuffe an diaoul, eun deiz, d'he lemmel diwar-n-on evel he dra ha d'am lezel evel-se en noaz dirag an dud. Ha koulskoude, klevit ar baotred-ze o kaözeal hag e roffont d'eoc'h da gridi (mar d-oc'h sod a-voalc'h evid ho c'hridi), penaoz n'ez euz nemed an ezom, nemed ar garantez evid ho fried hag he bugale hag a ra d'ezo labourat da zül. Ha mar rebechit d'ezo ar bannac'hou re a efont, e kaffont da lavaret d'eoc'h a beb sort sotisou ha kunuc'hennou. Ha mar komzit d'ezo euz a Zoue hag euz ho deveryou en he genver, en em lakeffont da vlapshemi, da laosker a beb sort ledouejou evel diaoulou komaret, dijadenaet ha dislonket gan an ifern war an douar. »

« Ne lavaran ket ez eo pec'hed mont d'an hostiliri, pa vez red mont, ez eo pec'hed efa eur banne, pa vez æz da ober, pa ne noaz ket an dra-ze da re ar gær. Mes, ha ne zeer ket a-liez d'an tavarnyou, eb rezon ebed ? Ha ne efer ket enno kalz a vannac'hou re, bannac'hou pere na reont nemeur a vad d'ar yec'hed ha pere koulskoude a goust arc'hant ? An oll arc'hant lakeet, eb rezon, er bannac'hou traou-ze, a-liez noazuz d'ar yec'hed, ha ne vez-en ket dispignet er gær en eur feson talvoudekoc'h, ha na esperffe-en ket d'al labourer meur a daol labour da zül ? Klevit ama, labourer yen zül : Lezit an tavarnyou hag ar bannac'hou re a gostez, ha n'oz pezo ket ezom da labourat da zül : lezit ho labourou sül a gostez, it d'an oferenn, d'ar gousperou, da zilaou ar c'hatekiz hag ar zermouyou, hag e teuffot, beb eun neubend, da bellaat euz an tavarnyou ha d'en em zic'houta euz ar bannac'hou re. Ne ankounac'hait ket ar wiryonez-ma : Al labourer yen zül a zo, peurvuia, peulyou tavarn, suneryeu gwer, festaouryen al lün, hag attao, priejou ha tadou fall. Ia, grit ec'hiz ma lavaran d'eoc'h, hag e c'houneffot e pep feson. Da genta : henori a raffot an ano a gristen a zougit, hag e c'hallfot esperout, evel ar gristenyen all, mont, eun deiz, d'ar baradoz; e-lec'h oc'h ober ec'hiz ma rit brema, na rit nemed kas sac'hadou glaou aroz-oc'h d'an ifern evit ho rosta epad an amzer eb termen. Ho kwenneyen, e-lec'h ho zeuzi e bannac'hou beterabez-pe patatez breinet, c'hwi a gavo anezo da ober ho tispignou en ho ti, da bourvezi ho pried hag ho pugale euz ho oll ezomou. Doue, pa raffot mad evit-ha, pa zervichfot aneza ec'hiz ma eo dleet, a vinnigo ho labour hag ho sikouro d'en em dapout mad en oc'h afferyou. C'hwi a roio neuze skwer vad d'ho pried ha d'ho pugale, c'hwi a vezo pried ha tad mad, karet ha respetet en ho

ti, istimet en dro d'eo'h gan oc'h amezeyen. Oc'h ober evel-se, c'hwil ne raffot mui poan d'ho korf, eb rezon, ec'hiz ma rit brema, ne usfot mui ho yec'hed ken pri-siuz d'eo'h, ne ziverrfot ket ho puez, evel ma rit bre-ma, o taoler kemment a c'hleupachou fall hag ampoe-zonet en ho korf paour. Greet a zir, e rankfe uza. Penaos, greet a gig hag a eskern, ne usfe ket !

« Ia, ne labourit mui da zil, mirif, santelezeit an deiz binniget-ze, o vont d'an ofisou ha da zelaou komzou Doue, ha ne ket d'an tavarnour, hag e yalo gwelloc'h an traou gan-ec'h hag evid ar vuez-ma hag evid ar vuez da zont. »

Y.-K. KERZALE, beleg ar Zalet.

(Eur pennad all eur wech all)

BUEZ SANT SAMSON.

(REVARE PENNAD).

Etre ma veve Sant Samson en eur peoc'h ar vrasa en he vanec'hti Dol eur doump vraz a savaz e Breiz-Izel dre fallagriez Canao. An den fall-man, crignet he galon gand ar c'hoant da gaout eur renk huel er bed, a-z-eaz eun deiz varlerc'h ar roue Jonas etre m'edo o chassaal, hag a lazaz anez-han pa sounje nebenta. Fu-lore dre eur muntr ker ien, ar bobl a n'em sao, hag a ia da gaout Samson evit hen pedi da vont da Paris da c'houlou, sicour digand ar roue Childebert, da lacat Judwal, map da Jonas, var drou Breiz-Izel. Sant Samson a assantaz mont. En em lacat a ra eta en hent er bloaz 554.

An miracloù a reaz var he hent hag er palez memez, a lakeaz Childebert da ober d'ez-han eun diguemer ar gouella. Cousgoude Childebert ne falvezaz ket d'ez-han lacat ractal Judwal var drou Breiz-Izel, abalamour da veur a dra n'eo ket red d'an holl gouzout. Mez douguet a resped evit ar Sant drou ma vele he furnez hag he san-telez, e roaz d'ez-han calz douaron en Normandi. Var an douar-ze, Samson a reaz sevet eur gouent hanvet couent Pental hag he lacaz dindan urjou couent Dol. Eun deiz en eur vont d'ar gouent-ze, Samson a dreme-naz dre eur vereuri hag a ioa da Sant Germain, escop Paris. An eost a voa o ren : ha dre ma ranket mont pell braz da guere'hat dour d'an dourneurien, Sant Samson a c'houlennaz digand Doue ma tenje eur feunteun da sevel e kichen al leur. Doue a roaz d'ez-han ar pez a c'houlenne. Sant Germain o velet eun eveler burzud a lavaraz da Sant Samson : « Mal red mo peffe mui a spe-red eghedome, rag biken n'en bije sounjet goulou kement all digand Doue. Deomp eta breman d'hen truga-recat. » — Ha kerkent an daou zant d'an daoulin.

En divez Childebert, pe evit lavaret gouel Doue, a lakeaz Judwal e penn he stajou. Ar prins anaoudec mad euz ar pez en doa great ar zant evithan, a roaz d'ez-han calz madou da stagua euz couent Dol. Da beden roue Breiz ha da heden roue Frans, ar pap Pelaj kenta euz an hano, a lakeas couent Dol da zont da veza escopti.

An holl iskibien a Vreiz a scrivaz ive d'ar Pap, en eur lavaret d'ez-han e c'ajent mad gouelat Dol escopti, hag e yellent gand levezaz Samson o kemer perz en ho zonez. Ar Pap eta a gassaz d'a Samson ar paperiou hen hanve escop a Zol. Ar zant a ziguemeraz ar paper-ze diarc hen ha daoulinet dirag an aoter.

Eur vech lakel e penn eun escopti, Sant Samson a dremene he oll amzer o scolja hag o sacramenti ar bobl a ioa roet d'ez-han da c'houarn. Gouelat a rea he oll escopti eur vech ar bloaz, hag eur vech ar bloaz ive e testume he oll veleien evit ho c'helen ha goulou digan-ho e pez stat e n'em gave ho farrechou. Eno ive en em glévent holl assamez evit ar pez a vije mad da ober evit lacat ar feiz da greski etouez ar bobl, evit discar an di-surjou a rene, evit sevel ha peinta ilizou ha calz traou-all.

An aket-ze en devoa evit gloar Doue ha silvidighez an eneou, a reaz d'ez-han mont adare da Paris, evit caout perz er c'honcil pe en assemble iskibien a voue great eno er bloaz 557. Er c'honcil-ze e roaz da anaout d'an holl he furnez hag he santelez vraz. C'hoant a voue d'hen lacat da signa ar c'honcil unan euz ar re guenta : mez dre humilite e lavaraz ne voa ket deut c'hoaz he dro ; hag e feat, ne roaz he sinatur nemed da ziveza, ha c'hoaz ne roaz nemed an teir gomz-man : *Samson, pec'heur, sinet em euz*. Ar roue Childebert her pedaz da vont da loja d'ar palez etre ma chomje e Paris ; mez ar zant a voue gouell ganthan mont bep-noz da gousket d'eur gouent savet gant Sant Germain. Sant Samson a ioa dija torret he gorf gand an oad. Eun deiz m'edo Samson o veachi en eun tam coz-car fall, e teuaz d'a unan ar rojou terri. Ar charretourrien nec'het braz a glaske a bep tu eun den benag da aoza ho c'har dis-tresset ; mes sioas ! edont en eul leac'h ne voa en-han na calvez, na marichal. Penaus ober ? Ar zant ho zennaz huan a nec'h : ober a reaz sin ar groaz yar ar rod torret, hag ar rod kerkent a voue dresset. Childebert o veza deut da gaout anaoudeguez euz ar burzud-ze, a reaz se-vel eur gouent e leac'h m'az eo ar ruet. Ar zant a hanvaz ar gouent-ze Rotmou hag e lakeaz dindan guir abatti Dol. En eur zistrei d'he escopti e rea miracloù dre gue-ment leac'h ma tremene ; tenna a reaz a gorf eun den, eun ar-viber a ioa eat en-han epad he gousk : o veza erruet e kear Dol, e roaz ar iec'hed da zaou-zen clanv prestic-prestic da vervel. Eun introu a lignez huel o veza eat e couent Dol d'ober eur bale en despet d'an difen great d'ez-hi gand ar zant, a gollaz ar goeled var an heur ; mez Samson gand sin ar groaz a roaz d'ez-hi ar sclerijen. Calz miracloù all a reaz c'hoaz Sant Samson, a velle re hir d'in rei aman.

Evit-han da veza deut da veza coz, ha torret he gorf gant ar iunniou hag an oll binijennou, ne heane cous-goude da ober enn dra benag evit gloar Doue ha sil-vidighez an eneou. Tremene a rea ar braz an noz o pidi. En divez, Doue o caout anez-han meur evid an env, a roaz d'ez-han da anaout ez-oa tost an heur euz he varo. Neuze e reaz dont d'her c'haout he chaloniet hag

he venec'h : Lavaret a reaz d'ez-ho, al levezaz var he visach, ez oa en eun gavet he heur. Lavaret a reaz d'ez-ho kemer, goude he varo, magoar evid escop. Neuze e lavaraz d'ez-ho evid kiviliaa eur gomz vad benag hag a lakeaz da veza an holl da reded, ha goude beza bet he zacamanchou dizeza, e roaz he vennoz da guement a ioa vevet d'ez-ho. Eno ive e reaz en he Bassion, hag e roaz he anaoudec da Zol an 28^{ar} viz gouere 565.

He c'hoant a voue great gand ar brassa lid. Euspen eur bobl hanveruz deut euz a hevar c'horn an escopti evit heuil ar c'horf d'ar bez, en em gave tri escop Sant Brice, escop euz ar ger euz an hano-ze, Sant Gervail, escop Sant-Malo, ha Sant Ruelin, escop Landreguar. An elez ive a falvezaz gantho heuil ar c'horf santel d'an douar rag er mare ma tiskennet an arched er bez, e voue gouelat eur sclerijen gaer en dro d'an toull hag e voue clevet eur vouez euz ar re melodiussa o tond euz an env.

Goude beza lennet eur vuez ken caer hag hini Sant Samson, pe setri ketel a denfomp-ni anez-hi ? Ar Sant-ma a zistrei he vro evit dont da zigaz e Breiz sclerijen an arched d'ez-han ha d'he kensortet ez-omp dleourrien d'ez-ho. Evit-han, n'oump ket galvet marteze da zilez Breiz-Izel, hor bro, evit mont da sclerijenna ar bro-mañ. E c'hoaz dizezet en devalijen euz ar pec'hed, mez a he c'hellomp-hi ket da viana, en em lacat e Breu-riez ar Feiz, evit rei dourin d'ar visionnerien ? Kement-ze a denne varn homp beñhos Doue, hag a roffe tro da Sant Samson da veza hor guir alvocad dirag hor barner.

BODEUR.

YANNIC A VIL VICHER

PE PENNAD HOU VAR CALS TRAOU HAG A VE MAD DA C'HOUD.
(TREDE PENNAD.)

An douar louzou (tizan), rag eur dra vad eo ? Penaos
maes n'he ober ? Penaos he implija.

Ne ket an dra-ze eo, Yann, va zad zo du-ze o yudal gant ar sec'het hag ar midicin ne fell ket dez-han e ve roet berad dour eris ebet ; nemet dour louzou ! dour louzou ! alad. Kercoùs, ne ket een muyoc'h evit ar re all ; holl emaint evel-se. A pa n'ho pe poan nemet en ho piz bihan : dour louzou ! dour louzou !

— Evit doare, va amezec, ne garit ket cals an dour louzou ?

— Couls eo ganeen, evit lavaret ar virionez, eul loundadic ead-ae-vie.

— Gar pe ne gar ket an izan, ne viri ket outhan da veza eun dra vad.

— Daoust da betra eo mad ?

— An dour louzou ne ra, couls lavaret, morse droug, hag eur vech var diou da nebenta e ra vad. Ouspenn an anter eus ar c'hlenvejou a vez pareet gant an dour louzou he han, hag evit an anter all, e ra cals vad. An

dour louzou zo mad ouz ar bas, ouz ar boan benn, ouz an darsien etc., etc. Onspenn, an dour louzou a laca an den elan da gaout berroc'h he amzer, her maga a ra hag er lacaat d'a zonj e poanier var he dro.

— Biscoas n'am boa sonjet en traou-ze.

— Cals brendeur a peus dreist-holl var ar maez.

Ha setu eno perag, cleac'h rei d'an den elan dour lou-zou, e roer dez-han dour yen, laz trenc, laz ribot, guin fall, hag avizioù, heterabez, en eur guer, a bep seurt lornez a ra dez-han muyoc'h a zroug-evit a vad. Kement tra a c'houlou ha kement tra a lavar rei d'ez-han an didaner, ar saver costou, etc., holl strobinellerien ar vro.

— Diez eo ive chom eb rei, an dud elan a gomz kenn dipitus avizion.

— Eun den elan zo henvel ouz eur c'hrouadur bi-han, ne oar ket peurya petra zo mad d'ez-han, aliez he galon a c'houlou zoken ar pez a hell ober ar muya droug, mez ar re zo yar he dro a dlee beza furroc'h evithan, ha rei d'ez-han ar pez so lavaret, ha netra keen. Da betra guervel eur midicin, ma na reer ket he lavarou ? guell eo e loskel er guer, kuit d'he damal goude-ze.

— Ar vidicinet a hello lavaret benhos Doue deoc'h Yann.

— Nann, mez egari a raan pa glevan tamal anez-ho, dreist holl pa na ves ket greet penn da benn ar pez ho deus gourc'hemennet.

— Eun dra vad, mez, hag an doare d'ober dour louzou ?

— Sell, ia da ! dizonet em boa ; diskuel din ar pez en d'eus roet ar midicin.

— Emaint aze, var an daol.

— Bleun, delliou, guizio ha skillenhou coat.

— Gout a raan ; penaos ober dour louzou gantho ? Ar midicin en deus sagouillet eun dra bennac ; ma c'leffen adarre e teuffe d'in marteze d'a zonj.

— Unan eus an tri zra ma a dlee beza lavaret d'ober : souba, paredi, castiza, rac, dao eo ober unan eus an tri zra-ze evit ober dour louzou.

— M'am, heuz sonj mad en deus lavaret ho ober ho zri. Lavarit d'in ta, mar plij, petra eo souba, paredi, castiza.

— Souba, da lavaret eo, tol dour bero var al louzou ; paredi, da lavaret eo, bervi dour varnezho ; ha castiza, da lavaret eo, ho lacaat da drempa en dour yen. Gouelat a reez.

— Ne velan ket mad avoallac'h c'hoas.

— Va Doue, te rancor planta ennout gant ar bis ! Souba, da lavaret eo, kemeret al louzou a peus c'hoant d'ober tizan ganthan, er lacat en eur scudel pe en eur benvec all benac, bervi dour hag he dol bero varnezhan.

— Ia, mez, peguement a louzou d'a lacaat, ha pegue-ment a zour bero da dol ?

— Daou veudad louzou evit eur scudellad vad a zour, muyoc'h pe nebutoc'h ; guelloc'h eo gouscoude, nebutoc'h, evit muyoc'h eus all louzou, rac, ma n'en

deus ket an dour louzon avoallac'h a vlaas, ec'h heller tol c'hoas eun deillen pe ziou, evel pa na vez ket sall avoallac'h, ar souben e c'heller tol goude ma vez tanveet, eun diou pe deir c'hreunen olen.

— Mad. Mez, pegueit e rank an dour chomm var al louzon ?

— An amzer de dol : eur minuden pe ziou da hirra.

— Souba, var a velan zo eguis ober the.

— Evel a leverez.

— Oh neuze ec'h ouzon ober. N'houn ket ped guech em beus guelet ober the. Me gred zoken em beus guelet va mam eur vech bennac oc'h ober tizan, mez, ii m'am beuz sonj mad, a dole an dour kenta kuit.

— Ia, dizonjet em boa er lavaret did, an dra-ze a ranker d'ober d'all louzeyer c'hueru pe roussinay ; an dour kenta a ve re green blaas ganthian, ha ne heller implija nemet an eil.

— Ar souba a deu braoic ganeen brema a gav d'inn, mez hag ar paredi ?

— Ne ket diassoc'h. Evit paredi n'eus nemet tol al louzon en eur pot, ha dour yen varnezho, lacaat ar podad traou var an taan, ober taan dindanna ken a vervo, hag er loskel d'a vervi eun anter heur, eun heur, diou heur hag aviziou zoken ken a vo uzet an drederen eus an dour. Ar midicin a lavar, peurvuya, peguement a louzon ha peguement a zour d'a lacaat, ha pegueit e rank hervi.

— Evel-se eo e reer souben.

— Dres.

— Oh ! evit an dra-ze ne ancounac'hain morse. Ne chom brema nemet castiza ; rac enn'hez em beus aon.

— Netra essoc'h. Tol al louzon en eur scudel pe en eur benvec all bennac, scuilla dour cris nevez kerc'het varnezho, ha derc'hel an dour varnezho epad daouzec heur, peder-heur varnuguent, hag aliez daou, tri devez. Evit ar c'hastiza, couls hag evit ar paredi, ar medicin a verk peguement da lacaat eus peptra ha pegueit e rancont chom e tremp.

— An dra-ze zo evel lacaat piz e glec'h.

— Cavet eo ganeez, a c'hoas e poa aon.

— Dale'homp sonj mad : souba, paredi ha castiza. Setu an tri zoare d'ober dour louzon. Mez, pe da vare e ranker souba, pe da vare paredi, pe da vare castiza ?

— Al louzeyer tener tener, evel ar bleun, an delliou glaz, ne ranker nemet ho zouba, mez all louzeyer eun tamic calet hag a deu diassoc'h an druzoni anezho, evel ar griziou, dreist holl pa vezont seac'h, a vez paredet, hag al louzeyer calet, calet evel ar skillennou coat, a vez ret ho c'hastiza.

— Bennos Doue deoc'h, Yann, brema a gredan, ec'h ouzon ober tizan conis hag eun all.

Ia, mez a gouzout a rez he implija ? Evel-se, peguement a zour louzon a peuz sonj d'a rei d'ho tad ?

— Diou pe deir guerenad bemdez.

Ober goab. Beza z'eus unan bennac a ne d'int ket evit gouzaon muyoc'h, mez roues int. Peurvuya eun den claan a dlee eva ken aliez a ma en deus sec'het.

— Ha ma n'en deus ket a zec'het ?

— E tlee eva evel ato. Goad eun den claan a vez peur liessa teo hag entanet gant ar c'hlenvet ; an tizan a dlee en tanoaat hag en distana. Beza z'eus tud claan hag a ev betec'pemp scudellat, vad a zour louzon bep peder heur varnuguent. An dra-ze zo cals, muyoc'h marteze evel n'a de ret evit meur a hini ; mez, an holl, nemet ar vugale hag ar re sempl dreist, a hell hag a dlee eva diou scudellat.

— Mez pe doman, pe yen, pe glouar e tlee beza ?

— Calz a zonz dez-ho an dour louzon a dlee beza evet atao tomm scaod. Mez devi a rit ac'hanon, eme ann den claan. Evit ho prasa mad eo a lavarer.

« An hen ha hen, eme ar grac'het coz, a zo maro ; ne ket souez : dour louzon yen zo roet dez-han. »

An dour louzon a hell beza roet clouar, tomm skaud pe yen. Clouar peur liessa ; tomm skaud pa vez c'hoant d'a lacaat ann den claan d'a c'houezi calz, ha yen pa vez an den claan goall sempl pe pa alter.

— Atao e tlee da viana beza sucr en dour louzon ?

Calz a sonj dez-ho an dra-ze. Kement-ze, coulscoude, ne ket guir. M'ar goulen an den claan sucr, lacaat sucr, ma na c'houlen ket ha dreist holl ma na fell ket dez-han, chom eb lacaat ; ober lavar an den claan.

Ha me d'ar guær, mar gouien, ha da en em lacaat d'ober dour louzon d'am zad.

(Eur pennad all eur vech all)

FABLEN.

Ann Anevaled klan gant ar vocen.

Eunn drouk a ra eus d'ann douar,

Drouk a-bers ann env e kounnar,

Great vit woaska ar bed breinet mel he eskern,

Ar vocen... ! pa ranker siouas hen henvel,

Cals re stris diouc'h he ioul puns ledan an ifern,

D'ann anevaled rea brezel ;

Ma ne varvent ket oll, oll e vezent taged

Nikun ne viche mui gwefet

O clask he damm evit arpa eun neubeudik :

Nan, mui naoun melchen pe naoun kig,

Gwillaou ne rea ken mil dro-kamm

Evit samma ann oan dinam,

Ar yer ive, ar c'hribelläk

Deus Alanik n'o doa menek,

Ann durzunel, dinac'het gant he far,

A hirvoude leun a c'hlac'har

Hag a gane klemmus a-us he neis goulo :

« Kenavo, va dousik, plijadur kenavo. »

Al leoun a ghemenn heb dale eul lez vras

Hag a lavar : mignonet keas,

Ar woalen-ma a deu varnomp eus an envou

Abalamour d'hor pec'hejou ;

Rak-se ra deuil ar woaska deus hon toues
Darel, eus he greizep, he c'hoad hag he vues ;
Pavoc'hennes honzet dindan birou ann Eal

Ann evadik a barec marteze,

En dunn entres henvel, idiouc'h ar skrijou guech-all

Ne argile ket ar chatal,

Gwelomp ta' peb hini

Stad hon ene, hep damant.

Evidomp-me naounek va bouzelleun,

Em beus debret meot dious an dousenn,

Pati, o devoa great d'inn ? Netra...

Em vech benak zoken oun eat betek lounka

Ar paotr denved.

Rehenn va buez mar deo red,

Mes mad e ve e teuffe peb unan

Evidomp-me d'anzao he ves-taoliou kraban,

Rac hervez lezennou peb bro,

D'ar falla eo mont d'ar maro.

Aotrou, eme Zom Lan, c'hwi zo re vad roue,

Pen em skrahit vit debren henvel-se,

Rag dibui denved, canailles,

Pennou dibacl a ra : he, he... hed eun dervez

Ann dra-ze zo pec'het ?

Nan, nan, ne ket

Brao-bras e bet dezo, aotrou,

O pe divar ho c'houst-lipet ho muzellou,

Hag evit ar pastor ec'h heller lavaret

Ne deo nemet boued ar grouk

Dre ma klask ren var ann anevalet.

Ha ma tougalies ho c'hroc'hen var he chouk.

Chetu prezeguen al louarn,

Ann oll a stlakas ho daouarn.

Ann tigr, ann ours ha cals a ezac'h-all,

Rus c'hoas ho vinnou gant goad meur aneval,

A hellasigouscoude eus a zrak al lez

Chacha gantho digailar ho braguez ;

Ia, potret ar c'hil-krog, du ho staon, lemm ho dent,

Chass-red, chass kigherien, a voe anzavet saent.

Mes chetu ann zenn a chelaouit, taolit pled

Ous he ies eun neubeut trefouet :

« Edon hag ez don, poe, eur vech siouac'h

O treuc'hi fouennek eur manac'h,

Evel m'am boa naon-du ha m'edon en dic'h'tro,

Ma velen gheot glac'h, glich pic'hennet varnho,

Eun diaoul benak a deuae'h d'am hilligad

Hag e treichon eunn anter-gouzougad,

Tra, n'em boa guin ebet d'astenna va zeed

Var ar goet.

Kros a zavas rak-tal : hu ! hu ! var an azenn,

Gwilaou, bet e Kerne o teski al lezenn,

A ziskoezas oa red sec'hi neat he vabous

Diar skouarnek sterius, d'ann tignous, d'ar c'hakous,

D'ar c'hel-ifern, penn-caos eus ann oll drouk !
D'ar grouk ! a choum ann oll, javed-azenn, d'ar grouk !
Peuri var dra eun-all... Pebes fallagriez !
D'ar maro ! pa na varf ket gant ar vez !...
Condaonet ta gant al lez-varn,
Ann azenn voe krouget var hoës he ziskouarn.

(LAF. I. VI. 1.)
KENTEL.

Ar bed, eme dad-kos, zo breman tort ha kamm ;
M'o peus danves, ghalloud, atao e viot dinam,
Ma n'ho peuz na ghalloud, na danves, mignoun keas
Hag e veac'h direbech, o pezo spount pe c'hlaz.
I. W.

Hano ar Zant evit ar Sizun-ma.

DILLUN, 25 C'HUEVRER. — Sant Mathias, abostol.

DIMEURS 26. — Ofis Passion hor Zalver.

DIMERC'HER 27. — Santez Mac'harit a Gortoon, peni-

tantez. (Er gatedral, gouel an tri berad goad).

DIZIOU 28. — Sant Ruelin, escop.

DIRGUENER, 1^o MEURS. — Sant Albin, escop.

DISSADORN 2. — Sant Jaoue, escop.

DISSUL 3. — Sul ar C'hinquagesim.

An Abostol hirio :

Va breudeur, ha pa gomsfen kement iez (langach) a gomz an dud hag an aez, ma n'am befe ket ar garantez, e venn hevel oc'h eur c'hloc'h o sini pe oc'h eun drompill o skiltra. Ha pam befe an donezon a brofesi, ha pa anavessen an oll misteriou, ha pa m'befe pep gouezieguez ; ha pa m'befe eur feiz leun, gwest da jench plas d'ar menezioù, ma n'am befe ket ar garantez, ne venn netra.

Ha pa m'befe dispignet va oll madou evit maga ar beorien, ha pa m'befe taolet va c'horf d'an tan da zevi, ma n'am befe ket ar garantez, kementse ne servichfe din da netra.

Ar garantez zo gouzanvuz ; sioul eo ha douguet da ober vad ; ar garantez ne deo ket goarisiuz, ne deo ket ter, n'en em c'hoez ket dre fougue. Ne c'hoanta ket ar reacou huel, ne glasc ket he mad he unan, ne da ket a zrong enhi, ne zouch ket a zrong euz ar re all ; ne vez ket laouen o velet dislealdet ; oc'h ar virionez avad e vez laouen. Gouzanv a ra pep tra, eridi a ra pep tra, esperout a ra pep tra, gouzout a ra gorios pep tra.

Ar garantez ne devezo termen ebet ; ar profesiou a eano, ar iezou, pe langachou a ielo en ho zro, ar skiant a vezo distrujet. Rag ar pez a anaoudeguez a ro deomp brema ar skiant hag ar profesiou, a so dister. Pa vezo deut avad evidomp ar mare eus al leunder, (da lavaret eo en Env) neuze ar pez so dister a ielo kuit.

Evelse pa edon buguel e comzen evel eur buguel, e varnen evel eur buguel, e sonjen evel eur buguel ; hoguen pa zoun deut da veza den, em eus dilezet kement a zell oc'h bugale.

Brema ne velomp Doue nemet evel dre eur mellezour,

evel eur skeud; neuze avad her guelimp drem oc'h drem. An anaoudeguez am eus brema euz a Zoue a so dister; neuze hen anavezin evel ma zoun va unan anavezet ganthan.

Brema on eus tri zra ama ganeomp, pe teir vertus; ar feiz, an esperans hag ar garantez: hoguen ar garantez eo ar vrassa hag an huella anezho ho zeir. (Kenta lizer S. Paul d'ar bopl a Gorint. xiii. 1.) G. M.

KELEIER.

An aotrou Yven bet person e Plogoff, so maro er sizun dremenet.

An nao a vis meurs, retred brezoneg evit ar voazet e Lesneven, hag evit ar merc'hed e Kemperle.

Ar c'huerc'h a vis meurs, demerc'her al ludu, e vezo eun eclips heol, evel kelc'h, (annulaire). An eclips-ze a vezo guelet cals pe nebeut e Breiz, azaleg eiz heur anter dioc'h ar mintin, beteg unneg heur. Da nav heur daou-uguent minuten e vezo en he vrassa. Lod a lavar ez eo ar c'haera eclips, (fallaen) eus ar c'hant-vloas-ma.

Er sizunvezioù diveza eo falleat var an ed. Cals ed so digouezet eus ar broiou all. Gouscoude Gazeten ar Meziou a lavar ato ne all ket an ed beza marc'had mad er bloa-ma; eo ar re a bren a fell dezho ober aoun d'ar re a vers, ha petra bennag ma teu ed ama eus ar broiou all, eo guelleat varnezh an derveziou diveza-ma.

Ar c'hlenvet var ar chatal a raadarre distruch e Beljic. Bez'ez eus eta mui evit biscoas da lacat evez.

En derveziou tremenet eo coezet ar gurun var tour hag iliz Lanrivoare. Beg an tour so bet discaret ha tolet var an iliz. Ar vein o coeza o deus crevet toen ha coatach. Goude beza discaret beg an tour, ar gurun en deus c'hoas faoutet ha discolpet mein eus an tour izeloc'h. Ne ouzeur ket zoken penauz e chom an nemorant en he za. Ne ouzeur ket ken nebeut hag hen en deus great droug d'ar c'bleier. N'oa ket gallet c'hoas mont beteg enho pa scrifet kement-ma. Evit an horolach a so goal lakeat. Mein eus ar re vrassa so bet strinket er vered eleac'h m'o deus brevet ar beziou, ha bete zoken er parkeier tro var dro.

Parrez Log-Eguiner Plouneour so great commun anezhi abaoue an 31 a vis kerzu 1866.

E departamant Finister, var gant den iaouane a denn d'ar zort, ez eus unan hag antercant ha ne ouzont na lenn na scrifa. An descadurez gouscoude so eat var araog abaoue eun nebeut so; rag brema ez euz pemp bloaz ez oa daouzeg ha triuguent var gant ha n'o devoa tam descadurez.

Ar Frans a zo dindanhi eis milion ha cant, c'huerc'h cant deg mil, daou c'hant pevarzeg ha pevarugent

devez arat, (e chifrou, 108,610,294 devez arat, pe 54,305,147 hectar.) Bez'ez eus seiz ha tregont mil pemp cant eiz ha daouuguent commun. Ne lavaran ket parrez; an niver euz ar parrezioù zo brassoc'h, rag bez'ez euz meur a barrez ha n'int ket commun.

E Plouiani, e kichen Montroulez, ez euz maro, e mis guenver, eur vaouez hanvet Jannet ar Besc hag e doa daou vloaz ha cant. Maro eo ep clenvet ebet, evel eur c'houlouen a deu da vouga pa ne deus mui a vouchen.

Mevl eun Aotrou braz, euz a Vrozaoz, a voa bet er chasse-brema ez euz eun nebeut derveziou, marc'h, fuzil ha chas he vestr gantha. He zac'h ler n'oa ket goal garguet o tont en dro; n'en doa paket nemet eur c'hioc'h. Araog digouezet er guar en doa da dremen dirag unan euz an tiez-ze eleac'h ma talc'her ar re foll, ar re so troet ho speret. Pa dremenaz e voa dres ar re foll o kemeret ho ebat dirag eur pors-rastel a scoe var an hent. Unan anezho a voa eno en he za o sellet hag a c'houlennaz outhan:

- Peleac'h oc'h-hu bet evelse?
- O chasscal, eme ar mevel.
- E ar mare'h mad so dindanhoc'h, pegument a dal al loen-ze?
- Hema so coustet pemp cant scoet d'am mestr.
- Hag ar fuzil so aze ganeoc'h?
- Houma nebeuta a dal eo pemp cant scoet all.
- Ouspenn zoken a goust.
- Hag an daou gui-ze?
- Va mestr ne rofe ket an daou gui-ze evit mil scoet.
- Petra zo ganeoc'h aze en ho sac'h ler?
- Eur c'hioc'h.
- N'eus ken!
- Nan.
- Hag ar c'hioc'h-ze petra dal?
- Pemp pe c'huerc'h guennec.
- Mad! it alesse neuze, hag it buan; rag ma teufe gouarnier an ti-ma ama, ha ma clefe en deus eun den dispignet daou pe dri mil scoet evit caout peadra da laza eul labous a bemp guennec, e lacafe cregui enhoc'h dioc'htu, hag ho lacafe ama en hon touez-ni, eleac'h unan ac'hanomp-ni.

An den-ze, evel a velit, ne gomze ket re fall evit eur foll. G. M.

PRIZ AN ED.

KEMPER. — 16 C'huerc'her.	PONT'NABAT — 14 C'huerc'her.
Priz ar c'hant liour.	Priz ar c'hant liour.
Guinis... 45 lur, 88 c.	Guinis... 46 lur, 25 c.
Segal... 9 lur, 32 c.	Segal... 10 lur, 21 c.
Eiz... 10 lur, 00 c.	Eiz... 10 lur, 38 c.
Ed-du... 7 lur, 20 c.	Ed-du... 7 lur, 92 c.
Kerc'h... 10 lur, 01 c.	Kerc'h... 10 lur, 38 c.
Avalou-douar 4 lur, 50 c.	Avalou-douar 4 lur, 73 c.

Ar Gerant: AR. DE KERANGAL.

Kemper, moulet gant AR. DE KERANGAL, Moullier an Escopti.

FEIZ HA BREIZ,

KELOU A BEP BRO, HA KENTELIOU VAR BEP TRA, DIGASSET BEP SUL

Da guement Christen a goms ar brezoune.

— Eun Abonnamant d'ar Gazeten a goust:

Evit eur bloas.....	DAOU SCOET.
Evit c'huerc'h miz.....	EUR SCOET.
Evit tri miz.....	C'HUEC'H REAL.
Eur gazeten ebken.....	DAOU VENNEG.

Ar bacamant a dle beza great araog caout ar gazeten.

ALIOU.

Ar scrijou a ve c'hoant da lacat er gazeten a dleer da adressi oll d'an Aotrou MORVAN, Beleg e Kemper.

Ar pacamanchoù a dleer da adressi d'an Aotrou SALAUN, ebken. An abonnamant a guemerer e ti an Aotrou SALAUN, librer, ru Kereon, e Kemper.

KEMPER, 2 Meurs 1867.

Bez'ez euz traou var an douar hag a laca souezet an dud difeiz pe dizoue. Souezet int o velet penauz ar gristenien catolig a gav ato peadra pa ve hano euz eun ober mad bennag, hag bi pa fell dezho ober eun dra bennag dioc'htu hag ho memo, a ia an eienennho gantho dioc'htu da esc, pe guentoc'h ne gavont nemet goaziou seac'h. Ar gristenien a gaf peadra da zavel bep bloaz eur zom ha n'eo ket bihan evit breurtez ar feiz, evit sicour ar vissionerien da gass sclerijen an Aviel dre bevar c'horn ar bed. Caout a reont peadra da zavel eur zom ha ne ket bihan ken nebeut evit diner Sant Per, evit sicour hon Tad santel ar Pap en he izomou. Caout a reont peadra da zavel sommou mad evit ober ilizou, chapelou nevez, evit caeraat ar re goz, evit sevel skeudennou pe imachou d'arzent ho fatronet, evit rei bara da hadust ket pegument a dud izomeg, en eur guer evit kement ober mad a vez c'hoant. Hag an dud dizoue, pa zao c'hoant gantho da zavel eur skeuden epken da unan euz ho ebstel, a ra c'azeg dioc'htu! Gouscoude ne c'houlennet nemeur a dra digant pephini. Asten an dorn eo a reat eun aluzennig epken eo a c'houlennet! Mes etouez an dud ep-religion n'oar boas dioc'h an aluzen.

C'hoant braz o devoa evel kent da zavel eur skeuden gaer d'ho abostol V... Hag eun dra dereat e vije bet kementse, eme eur scrifagner christen, dreist oll ma vije savet dirag skeuden V... eur skeuden all ive d'an Aotrou H... da behini eo bet deut ar zonc'h vad-ze. Rag neuze ar potr bihan o velet an diou skenden-ze en divije goulennet digant he vam:

- Va mam, petra eo an dra-ze!
- Va map, ar skeudennou-ze so savet da dud ep religion. An hini en tu-ma eo skenden V... tad ar gaeier, abostol an dud difeiz, an dud divergont.
- Oh! Va mam, nag hen so divalo, discrognnet he zent! Oh! Me am eus aoun razhan!

— Oh! Va map, an den-ze en deus great ar brezel da Zoue, hag evelse eo henvel oc'h an droug-speret. Rag-ze, va map, carit ha servichit Doue evit na viot ket henvel outhan.

— Hag hennez en tu-all, va mam, an hini teo-ze? Oh! Setu aze eur min farsuz avad!

— Hennez eo an Aotrou H... so falvezet dezhan bale var roudou V... Sonch oc'h euz-hu, va map, eus ar pez a lennac'h en dez all en ho kentel tennet euz an Aviel? Jesus en doa great d'an droug-sperejou mont er meaz euz a gorf daou zen. An droug-sperejou a c'houlennas beza lezet da vont e corf eur vandennat moc'h a voa eno; ha Jesus a roas he otre dezho da vont er moc'h. Ama ez euz digouezet ive eun dra bennag evelse. V... en doa speret, mes eur speret fall, eur speret a vije lavaret deut euz an ifern. Hirio he speret a zo tremenet en eun doare bennag e corf an Aotrou H... Hoguen an Aotrou H... a so ken teo an donner varnezh an, a so ker groz an danvez oc'h he ober, ma zeo chomet evel ma her guelit aze. Rag-ze, va map, c'hui pehini a gar Jesus, dalc'hit mad d'he garet evit ne deot ket da veza henvel oc'h nicun euz an daou-ze.

Evit distrei d'ar pez a lavaremp hueloc'h, ne oufe beza mad da rei nemet ar re o deus religion, nemet ar re a ro evit Doue. Ar guir gristen a voar ne lezo ket Doue ep gopr pe recompans eur verennad dour epken roet en he hano d'ar paour. Gouzout a ra, pa o he venneg evit eun ober mad bennag, eo had a daol en douar, hag e savo divizatoc'h da eosti cant evit unan. Hoguen an hini ne ro ket en hano Doue, an hini ne zao ket he zonc'h hueloc'h evit traou ar bed-ma, a vezo ato gourd da zilasa he iale'h.

Rom. — Gouel Sant Ignas, escop Antioch, a vez great bep bloaz gant solanite vraz en iliz Sant Clemens. Eno ema relegou ar zant, hag an iliz-ze so e kichenig al leac'h ma voue malet ar merzer santel gant dent al leonet, evel guinis da ober eur bara pur da Jesus-Christ. Er bloa-ma,

ar Pap so eat he unan da iliz Sant Clemens da vare ar gousperou. Goude beza adoret ar Sacramant ha pedet dirag relegou Sant Ignas, Pii nao so diskennet er chapelou dindan an douar. Goudeze eo eat da eur zacristeri eleac'h ma virer en eun armet cals relegueier sant cavet dindan an iliz. An armet-ze so siellet, ha difennet eo he digueri dindan boan a excommuniñ. Hoguen ar Pap n'en doa nemet eur guer da lavaret evit lamet an difenze. Hen lavaret en deus, ha kerkent ar siel so bet torret. Eun niver braz a eskern so bet tonnet euz a eur voest plom. An Tad Santel so pleguet da zellet outho, so en em laket var he zaoulin, hag en deus poket dezho gant cals a respet. An daelou a ioa en he zaoulagad. Goudeze en deus lavaret : « Ama ez eus relegou cals merzerien. Ne ouzomp ket an niver anezho. Nag a izom n'on eus-ni ket brema a zicour digantho? Ah! pedomp! » Hag o stouet he henn eo chomet eur pennad mad da bidi. Neuze en deus gourc'hennet lacat adarre dioc'htu ar siel var an armet.

Eur c'hloareg, a glouardi Luçon, a ioa bet carguet da gas d'hon Tad Santel ar gnenneien savet er guer-ze gant ar botredigou hag ar merc'hedigou bihan, izeloc'h evit daouzeg vloas. Setu ama penauz e lavar e voue diguemeret. Pa voue casset dirag ar Pap, Pii nao a astennaz he zorn dezhan hag a c'houlennas outhan a beleac'h oa, ha pa en doa respontet ar c'hloareg, e lavaras laouen braz : ah! euz a Luçon! euz ar Vandee! hag e tiskuezas c'hoas muioc'h a joa. Neuze en em lakeas da ober meuleudi Escop Luçon a ioa neuze ive e Rom, hag o velet e dorn ar c'hloareg eur boket en doa hema sonch da guinnig dezhan, e c'houlennas gant cals a vadelez : petra zo ganeoc'h aze en ho torn? Ar c'hloareg neuze a lavaras d'hon Tad Santel e voant fleur great gant an dorn; discleria a reas piou en doa ho great hag e tiskuezas dezhan an ofrans cuzet e goase deliou eur rozenn venn.

Ar Pap a voue tenereet he galon o velet-ze, hag a lavaraz en eur c'hoarzin : Radix! Radix! da lavaret eo; setu aze ar c'hrizien, hag euz ar c'hrizien e savo eur fleuren. Ar c'hloareg a lennas neuze eul lizer scrifet gant bugaligou Luçon. Ar Pap a respontas dioc'htu d'ar vugaligou : « Doue r'ho pennigo ha r'ho tionallo, bugaligou; ha c'hui, guere'hez, meulit Doue! » Var guementse ar c'hloareg en em dennas.

Comzet on euz euz eur plac'h iaouanc pehini, o veza na elle ket mont he unan da arme ar Pap, a roe pemp cant lur evit lacat eur soudart en he leac'h. Setu ama al lizer scrifet ganthi evit goulenn ar c'hras-ze :

Lyon, ar 14 a vis Guenver 1867.

Aotrou,

« Eur glac'har braz am eus dre ne ellan ket mont da arme ar Pap. Siouaz! an honor-ze ne all ket beza evidon, rag me zo eur plac'h iaouanc. Gouscoude marteze, dre

vadelez Doue, va c'hoant ne vezo ket collet. Great en deus din ar c'hras da zevel arc'hant avoalc'h evit delc'her eur zoudart en arme-ze. An arc'hant-ze a gassan deoc'h, Aotrou, de h'ho pidi da lacat eur zoudart em leac'h. Ouspenn ar pemp cant lur, e cassan deoc'h eur scapuler evit ar zoudart a ielo em leac'h. Ar scapuler so bet benniget en Itron Varia-Fourvier, ha great eo euz a zae eur federal hag a ioa eur brezelour caloneg hag eur zant. Mar en deuz ar zoudart an heur da vervel keit ha ma vezo en arme ar Pap, em euz eur c'hoant bras da c'houzout peur e vezo maro, rag eun dever e credan e vezo evidon pedi evit he ene, p'eo guir e vezo maro em leac'h. Plijet gant Doue ec'h errufe va arc'hant abred avoalc'h hag em befe va goulenn ho pet ar vadelez, Aotrou, d'hen rei din da c'houzout, mar guellit. Eun dra bennag am eus goestlet da Zone an armeou, mar em bez ar c'hras-ze. »

« Aotreit, etc. »

Beleg ar zoudart en doa lennet al lizer-ze a vouez huel dirag an oll. Pa voa eanet da lenn, pe eun nebeudig goude, setu eur c'hloareg iaouanc eus a Rom o tont d'he gaout, leut, he benn gantha stouet, an daelou en he zaoulagad, beac'h dezhan o coms.

— Aotrou, emezhan, al lizer-ze so digant eur zantez. Oh! nag hen so caer!

— Mad, ha goude?

— Goude? Me garfe beza ar zoudart a ielo eleac'h ar plac'h iaouanc-ze.

— Ia? Mes, va mignon, hag ho soudanen?

— Me dolo va zoudanen evit eur pennad. Ha neuze mar deo guir ar pez a lavar ar plac'h iaouanc-ze, an hini a ielo en he leac'h a ell mervel, ha neuze... va zoudanen a vezo sae eur merzer.

An droug a denn an droug, mes evel a veler, ar vad a denn ive ar vad.

Ar brud so bet savet, n'eus ket pell, e voa distroet oc'h Doue unan eus a renerien difeisa cazeten a scrifer e Frans. (*Le Siècle*). Var guementse e comzer ive euz a zistro eur rener all hag a zo distroet brema ez euz eur pennad amzer, hag a so hirio eur c'hristen mad. Setu ama petra lavar he unan :

« Me anavez eur pec'her braz euz hon amzer hag a so distroet oc'h Doue. Gounezet dre vadelez hag aliou eur c'hreg santel, ez eaz eun dervez evel eun dall da zaoulina dirag imach ar Verc'hez didach, hag eno e lavare : *Mam va mam, roit sclerijen din!* Kercent e cleo en he ene eur rebech carantezus, hag he galon a venn ranna. Ar memes dorn trugarezuz en doa he gasset beteg eno, her c'hassas c'hoas beté treid eun den Doue, eur zant. Pa en devoa ar map prodig-ze, epad tri dervez, roet da anaout he vuez carguet a bec'hejou, Person Ars (rag hen oa) a lavaras dezhan gant ar brassa dousder :

« Va map, lavaret a reot eun Ave d'ar Verc'hez, hag eur *Veni Creator* da Zoue. » Hag e savaz he zorn evit rei an absolver.

Mes, eme an den-ze, va zad, pe seurt piñjen, pe seurt poañjou, pe seurt beac'h, pe seurt croaziou da zougne evit eur yuez ken euzuz, evit eun hevelep bern pec'hejou?

— Va map, eur beden aketus, da vam didach, hor Zalver, eur beden aketus da speret, Doue pehini, a deu da hoze pen tra yar an douar, n'oc'h eus izom ken.

— Clevet ar c'homzou a drugarez-ze, ar map prodig a zigoras da youla, he zaoulagad a zigoras, anaout a raz izom an Env e comzou ar c'homzour carantezus. Abaoue ar pec'her braz-ze so catholic, ha catholic bete r'ho.

— *Le Messager ar Galon sacr* e lenner ar burzud-ma hag a ziskuez ners ar beden great gant calon ha fizians.

— Vandro Marburg e chome eur zoudart coz en em dennet euz an arme goude beza collet eur vrac'h er vrezel er bloas 1848. Unneg buguel en devoa, ha n'en doa evit ho beva nemet eun tamig pansion a receive. Setu he c'hreg o goeza clan, hag o vont toc'hor. Ar medecin a lavar e great ganthi hag a ro ali da rei he diveza sacramantou dezhan. Kementma a voa d'ar pevarzeg a vis goude da noz. Antronoz vintin, ar zoudart coz a red d'an iliz, ha stouet dirag an aoter, en em laca da bidi c'hoec evit ar c'hras clanyouez. E'hui a reaz he beden dre ar c'homzou ma leut a zentidiguez oc'h bolontez Doue : *Ho bolontez bezet great, ha ne ket va hini me!*

— Var an aoter ez oa eun daolen eus ar galon sacr. Ar zoudart coz a gav dezhan e ra hor Zalver eur musc'hoars carantezus outhan. Mont a ra kuit leun a fizians, hag e reud d'ar red d'ar guer. O vont dreist an trezou en ti e lavare : Doue ra vezo meulet, ha ra roi deoc'h ar frouez euz an oferen am eus clevet! Ia, Doue ra vezo meulet, eme he bried, rag pare oun! C'hoant e devoa da zevel dioc'h-tu memes ne voue ket lezet. Abenn eun nebeut goude e voue gouscoude red he lezel da zevel euz he guele, ha pa voa savet, en em gave iac'h couls ha biscoas. G. M.

LAN AN DALL.

Petra eo hennez, Lan An Dall? Petra fell dezan da c'hlabousad?

— Lan An Dall, va zud keiz, n'eo ket eun aotron, n'eo bet biscoaz aotrou, n'en d'euz c'hoant ebed da veza aotrou.

— Ah! mad, chetu aze eun dra zrol : en eun amzer ma clask kement a dud mond da aotrouien, e ve unan ne c'hoanta tam beza aotrou!

— Evelse eo, va zud paour, ha Lan An Dall a c'houlenn bemdez digant Doue ar c'hras da veza bepred ar pez ma'z eo bet betek an deiz a hirio. Lan An Dall a zo eun denik divar ar meaz, eur c'hristen oc'h penn.... netra ken, aoualc'h eo.... Couer leal ha christen guirion, an dra-ze eo an affer evit mond d'ar baradoz.

Ganet, badezet ha savet var ar meaz, Lan An Dall a zo bet ive scoliet var ar meaz, ha scoliet a zoare, ker brao ma oar gallek ha latin dioc'h ar guir danvez. C'houi, aotronien kear, a vezo sae ganeoc'h clevet eur seurt marvail, a rai poan deoc'h cridi eun hevelep burzud.

C'houi, aotronien a drivac'h, ugent vloaz, doctored flour, kun c'hoaz hoc'h elgez, a gav deoc'h n'euz skiant, descadurez nemeur nemet e kear. C'houi hoc'h euz an eur da vale var bayeou, abaoue ma ouzoc'h bale, hag a scrij ec'hiz demezelledigou pa velit var hoc'h hent eun nebeut pri pe eur poullik dour, anzavit ama ar virionez : n'oc'h eus-hu ket sonjet ha lavaret, cant gueach evit unan, n'euz var ar meaz, e mesk al labourerien, nemet tud sot, hevel aoualc'h oc'h ar zaoud, ar c'hezec a ra eul loden vraz euz ho ziegez? Pe seurt bennak hoc'h euz credet ha prozeget, Lan An Dall, hag hen couer, ma da gouer, hag hen bet he oll amzer var ar meaz em eun ti sot, en eun atantik, o labourad he barkeier, o searza he greier, o prena, o verza, o sevel loened, Lan An Dall, daoust d'he hano, d'he bemp bloaz ha tri-ugent, en d'euz desket, mar plij ganeoc'h, hag a oar c'hoaz gallek ha latin, a gaoze gallek ha latin couls ha meur a hini all, gualloc'h evit he Aotrou Mear, eun aotrou reud gouscoude, ha guisiek, ha bozet dioc'h peb tra, evel m'heil lavar a vouez huel da bep unan.

— Gant piou neuze, a c'hrosmel tud kear, en d'euz Lan An Dall desket kement a oar. Gant piou, va zud-chentil? Gant eun den ivez oll divar ar meaz. Pe e vezo joa, pe e vezo droug ganeoc'h her c'hleved, Lan An Dall n'en d'euz bet ken scol nemet hini an Aotrou Person euz he barrez. Hep ober an dilez euz he vrezonek, iez he dad hag he vam, eur iez ker saouruz evit eur guir Breizad, Lan An Dall, mar goar latin mad ha gallek leal, a hell goude Doue, trugarec'ad an Aotrou Person en d'euz bet he vadezet, ha roet dezan he bask kenta. Ah! eun den jurdik, evit guir, eun den rust oa an Aotrou Person coz euz va farrez, mez ivez eun den a benn, a guzul vad hag a galon dom. Hennez, clevit, evit ober vad d'an dud, d'ar vugale couls ha d'ar re vraz, ne veze ket ganthan kement a storlok, kement a vres, ne rea ket kement a deil evel a rear hirio, a iea eun gant he hent, ha ne goueze, ral, euz he za nemet pa veze great dezan gourvez gant al labour hag ar skuisder.

Hennez a lavare deomp-ni dalc'h-mad : bugale, labourad ha poania a ranker evit beva; an affer genta gouscoude eo beza christen fur, den honest, evit plijoud da Zone, ha gounid ar baradoz. Hag e ve teret ho tillad, va bugale, spinac'het, faoutet ho taouarn, hag e ve garo ho sculio, mar bezit guir gristenien, c'houi a rai henor d'ho pro, d'ho mestr, d'ho pastor; c'houi a vezo caret gant Doue, hag a hello conta var gloar an Env. Bugale, a lavare deomp-ni c'hoaz liez a veach, bugale, na glaskit ket beza aotrouien; an dra-ze zo danjeruz; couer a ia da vourc'hiz ne dalv ket ral ar laou.... Ho pet sonj euz va c'homzou, ha chommit an dud ma'z oc'h crouet gant Doue.

Hennez a hanve an traou dre ho hano, a blante skiant

e penn he baotred da heul ar gallek hag al latin, a onie frota discouarn ar re ne zeskent ket, a roe dezo da veled forz stered e creiz an deiz, mez ive a lakea guenneien, frouez, per, avalou... e daouarn ar re a boanie a studie, a zeske... Achanta, tud chentil, anaoud a rit-hu penaos eo deut Lan An Dall da c'houzoud gallek ha latin? Pa velit eta ec'h oar eun dra bennak, Lan An Dall a garfe ober ganeoc'h eur frapped caozeal. Ganeoc'h-hu, tud kear, n'euz ken hano, pell zo, nemet euz hon amzer, euz hor gisiou, euz hor burzudou, euz hon nevezentiou... Var ho meno, en hor raok ni n'euz bet nemeur var an douar nemet tevalijen, nemet briz-tud, nemet traou ne dalient ket ar boan... Brema hep-ken eo ec'h ouzor beva, ec'h ouzor labourad, ec'h ouzor beachi, ec'h ouzor en em visca, en em vaga... ec'h ouzor, ia, peb tra, e teuer a benn a bep tra... hag hep dale ne vezo izom ebéd euz an Aotrou Doue... An dud deuet da vraz, ha leun a skiant, a c'halloud, a hell ober ho oll afferiou hep an Aotrou Doue-ze a zo, e guirionez, re goz divar ar mare, hag a zo poent mad dezan paouez, lezel he labour, he zoursi gant re all, da c'houzoud eo gant an aotrouien; rak couer ne glask ket nemeur c'hoaz, da yihana e Breiz, paca an Aotrou Doue en eur penn-ti evel eun tad coz, ne oar, ne hell mui mond en dro. Var an traou-ze eta, ha marteze var re all, e venn ioulet me da ziscouez deoc'h ne dleomp ket ni en em veuli, en em zével re an oll, na disprizoud kement an dud ho d'euz bevet en hor raok.

Kenavo neuze eur veach all, tud chentil, ha bezomp, da c'hodal, hostisien.

LAN AN DALL, couer.

YANNIC A VIL VICHER

III. — AR PALASTR.

PÉTRA. EO. — PENAOS HE OBER. — PENAOS HE LACAT.

Goude va c'hoan, e redis da di Yannic. Laouen e oan evel an heol, nijal a reeu. Kement a fougue a oa enn hon. Deut eo ganeen a liviris, o tol va zroad dreist an treuziou.

- Græt e peus dour louzou d'ha Tad?
- Ia, ha cals traou all c'hoas.
- Petra-ta?
- Ar medicin, evel a ouzoc'h en doa lavaret ive ober eul palastr ad liin?
- Hag e peus græt anez-han?
- Ia, ha great avad, ne ket lavaret ober eo.
- Guelomp.
- Kemeret em beus ar bleud ad liin digasset gant ar medicin, tolet anezhan en eur podadic dour bervet, mesket ha poazet anezhan evel a ra va mam pa vez oc'h ober yot guinis.

— Mad avoallac'h, ha goude?
 — Goude ez on eet ganthan da gaout ar guelo hag em beus roet anezhan a loyadou d'am zad evel ma roer yod da eur buguel bilan.
 — Emaout o lavaret gueyer!
 — Ker guir ma maon ama. Da guenta e c'hine. Goude beza lonket eun diou pe deir loyad, ne felle ket dezhan kemeret ken fall dreist e cave anezhan, e-mez-han, Dabit ato, emomme, ennez a rei vad deoc'h. Aviziou e venne dezhan mouga, n'eus fors me zalc'he berr, gout a reem e raje vad dez-han, ha n'en deus bet peoc'h ebet diganen ken en doa lonket an tamm diveza. Aan, Yannic, ne ket evelse eo ober?

- Deut eo ganeez avad.
- Oh evit d'eus ar palastrou ec'h ouzon couls a n'eus forz piou.
- Den sod!
- Den sod!!!
- Ia den sod. Pe ma na varv ket da dad ez eo diez d'a laza. Eur palastr zo eul louzou evit an dianveez, ne vez na debret nac evet, evit asten anezhan var ar c'hroc'her eo e vez great.
- Penaos ec'h elfe neuze ober vad?
- Toma ra ar c'hroc'hen; evel an domder a roo a zo eun domder leiz, ne boas ket, pell ac'hane, distana, souplaat, laza ra ar boan pa vez lakeet var eur gouli, var eur gor, var eun ezel glauzet pe c'hoenvet.

— Mæz penaos en em guemeret evid ober eur palastr mad?

— Setu ama penaos e vez græt eur palastr ad liin: Ret eo lacaat dour en eur pot, bervi anezhan, tol ar bleud ad liin eunhan pa verf, kemesk anezhan hag ober tan dindanna, ken a ves deut da devaat, ha zoken, ken a vez poaz. Arabad e ve re deo na re dano.

- Evel ma reer youd eed?
- Dres. Goude e vez ledet mad var un tamm lian, hag evit miret n'a redo e tu ebéd, e vez græt pevar bleg en tamm lian, unan e pep tu hag eun all e pep penn. Setu aze, e berr gomzou penaos e ves græt eur palastr ad liin. Evelse ive e vez græt eur palastr minvik ha zoken eur palastr bleud sezo.

- Ne ket diez, mar de ken æz he implija?
- Æssoc'h c'hoas: Evit ar palastr ad liin pe vinvik, eur vech græt n'eus nemet e lacaat el leac'h ma ze lavaret, he loskel eno epad ma chomm tomm hag he lamet rac dall ma teu da yena.
- Var ar c'hroc'hen noas e tlee beza?
- Ia bevec'h mac'h heller: muyoc'h a vad a ra. Pa na heller ket e vez goloet holl gant an tamm lian; an tanoa hag ar ronessa eo ar guella ha lakeet evelse el leac'h ma tlee beza.
- Hag ar palastr bleud sezo, penaos e ves græt?
- Evel ar palastr ad liin, pe m'a n'eus ket amzer, n'eus nemet diveski ar bleud sezo gant dour yen, ha setu græt ar palastr.

— Da betra eo mad ar palastr ze?
 — Da danna ar goad el leac'h ma vez, d'er lacaat d'a boy zisken, da konteus an diabar en dianveez: evel-se, mar de savet re ar goad d'ar penn, n'eus nemet lacaat eur palastr bleud sezo var ar c'hoz-gar hag e tiskenno.

— Roguit ellee chomm el leac'h ma vez lakeet?
 — Eoric liard-heur eun antel-heur an hira pa loskerianez-han re hir, bledet e gant pe a rad mæz devit, d'adig le sav d'indannan el goro em d'leul a zour eguis ed'ha verez poazet gant an tann. Ouspæ-ze, eun dra poazet gant anezzo, azo guiridic dreist a vez pell o para, a sig'ha tleez el leac'h para e vrein gant ar c'hirn-beo.

— Ana ve ket mad seullia eur banne guin-ægr var nezhhan?
 — Morse. Ar guin-ægr a lamfe diganhan he nerz, ne grogfe ket couls.

— Gouscoude gant ar sezo a ves var an dol, e vez lakeet guin-ægr.

— Ia, anez e ve re grev, ne vet ket evit he lounca.
 — Setu aze ar pezh am beus da lavaret dit var ar palastrou.
 — Dabit hec'h mad he ket traou d'a zebri-int.

— Bennos Doue deoc'h, Yannic, a viziken me vo fur-roch.

AR FOREST-DU.

En Alsace e zeus eur c'hoat hañvet ar Forest-Du, dre ma zed c'argud a woues harp-en-harp, pere hevel eun doen a c'holo gant ho skourrou meur a gant derves: mara da eun den a na anaves ket an doareon ac ar guennochenno roues a zo er c'hoat-ze e ve riselus clask hec'h treuzi.

— Cals amañ petra zo c'hoarvezet eno brema e zeus meur a vloas. Eon den o tistrei diou eur veach hir a ranke evit errout em gear ober hent dre ar c'hoat-ze.

— Oridi e chelecheben treuzi araok an noz, e valec hevel eun den a n'eo deus ket amzer da goll, pa velas e tostea an d'ha padaves. Nec'het, ac eb soues, e red en tra c'hell, a hagn en deus ne vel ato nemet goues.

— Cetu hec'h sezret gant an noz du: ne vel mui nac hent na netra, bale a ra hevel eun den dall, eb gouzout e pe du e za. Ne gleo a bep tu dezan nemet moues al loenet goues o tual dre ar c'hoat, ken a dreguern eus an eil penn d'eguil. Va den paour a gren hevel eur bern-deillou, e risel dalc'had da goeza e signan squillou al loenet goues. Dre signan ar c'hoat, e ban an eun, ne vel na loar na stered. Neuze, o tenna e dog, en em dol dan daoulin ac e lavar d'ar Verc'hes eur beden calounek. Goude e pign en eur vezen huel, ac ac'hano o sellet en dro dezan e vel a bell dre doues ar goues eur sklerigen hevel ois hir eur c'houlouen. O veza diskuennet, e kers buan a laouen varzu ar sklerigen-ze pini a dlie discoues eun ty benac. Goude cals a boan e tigoues en berr e kichen eur voguer huel, ac en tu all dizi eun ty bras var gorre pini e c'hell goelet eur groas, ar pes a ro dezan da gridi e zeus eno eur gouent.

O'kaout an hor, hen da skei crefa ma c'hell. Goude beza gortozet pell ac'hir, e teu eun den guisket en eur manac'h. Piou a zo aze, emezan, d'an heur man? — Eur beacheur kollet divar e hent ac a c'houlou beza repuet en noz-man en ho ty, evit na varvo ket er c'hoat. — Ar venec'h a zo breman o lavaret ho olls, choumit aze a bremaic me a c'houlou a loget e viot. Eun heur goude e zeo digoret dezan a pedet da heul ar memes manac'h pini a vale en he raok eb lavaret guer. Pignat a reont an delezioz men eus ar gouent betec an trede astach. Eno ar manac'h a sigor eur gambr tenval; eetu aze emezan ho logeis, a ker buan o veza er pouzlet enni e ser an-hor ac e ra diou dro dan-alc houes, a goude grie ebet ken. En eur gambr tenval, eb tan na goulou, petra da sonjal? E pelec'h e man? E lonc pe zeurt tud? Kemeuse oll el lakee da grena. Gouscoude e za a skorou e freuzek ar prenest. Ac'hano o sellet a signan-han e vel eur sklerigen oa a du eus eur prenest izelloc'h. Clevet a ra danzal, caua, e hoarzin. Ne c'hoar mui petra da sonjal. Skuis maro e za den em delour var e vele; sur ne serro lagad; mes a veac'h ma en deus tolet e zourn var an dillad, ma ra eun lam var e guis, trubuillet oll; e zourn en deus zantet eun dra benac ten sklaz. Deud ennan e uvan e ten eus e c'hodel eun tam tonn gant pini e ten tan. Pebes horrol! a vel neuze dirag e zaoulagad l var ar goele eun den maro trouc'het a damon; var ar gambr eur poullad goad. Red eo, emezan en eur grena unan pe zaou, pe vervel aman, pe dec'hed: mes penaos guelloud en em denna ac'hale; an hor a zo alc'houezet, ac ar prenest a zo marteze tregont troatat diou an douar.

Regui a ra neuze an dillad vele, ober a ra ganto eur gorden evit disken dre ar prenest dan douar. Gouscoude aoun vras en deus na ve goelet, rac disken a rank abiou ar prenest e pini e vel sklerigen. Neus fors disquen a ra ato, ac en eur tremen buana ma c'hell e vel en eur zal vras eur vanden dud goazet a merc'het o tanzal ac ho c'hehati. Cridi a ra beza e savete pa deu eur c'hi bras da arzal beteg ar voguer eus pini edo a sistribil. Collet eo, ar c'hi en diskuillo. Ker buan e tol dezan eun tam bara a ioa en he c'hodel ac e c'hell miret outan da arzal. Eur veach dan douar e red betec ar voguer dosta var behini e pign dre eur vezen, ac'hano e lam en tu-all eb gouzout e pelec'h. Pa vel nen deus ket torret e sivesquer e red buana ma c'hell ac a benn ar mintin e tigoues eun eur gear vras. Eno kenta tra a ra eo discuil dan archerien ar pes en deus goelet. Ar re-man gant eur vanden soudardet o deus kemeret ar gouent en behini e zeus cavet triquent laer goazet a merc'het pere goude beza lazet an oll venec'h e ioa bet eno, a veve ennan e peoc'h dre ma roent da gridi dan oll divar dro oa ii ar venec'h. Meur a veachour kollet er c'hoat o deus lezet eno ho bues ep ma vige clevet anezo na roud na menok. Al laeron-ze a veve eno gant an arc'hant a laerent, divar goust an oferennou ac ar profou a vige digasset alies dezo.

I. G.,

Vikel e Plouzane.

Eun doare nevez da barea eur mevier.

Planeden mevier, piou n'her goar?

A zo kaled var an douar?

Loja er mæz, er fank, er pri,

Rei kalonad d'ha dud he di,

Teleur bugale var golo,

Chom en noaz ha dizolo,

Ten' dismegans var he lignez,

Mervel gand an naon aliez,

Ha n'eo ket aze tost pe pell

Planeden eur foët-he-drantell?

Mez hen distrei a helleur kren,

Pa vez straket mad an douchen.

Tri gamarad, potred c'houek,

Skav a droad, ha lem a vek,

Da glask gadon ha kounikled

Glujiri ha keffeleged.

A zo et d'ar *Menez-Bian*,

Eun nosvez, goude ho c'hoan.

Ar chas dija, el Lannek-Yeur,

A glaske kals, eb kaout nemeur:

Gwech an amzer eur chilpaden,

Mez netra mui en abaden.

Chit! chit! petra a glevan-me?

Petra a glevan o tond aze?...

Hag an tri bod kercent a tra

A zant ho anaon o krena.

(Laret a rer, n'her c'hredan ket

E teu' pri' euz toull keffelek).

Ho enkreiz buan a dremen,

Rag klevout reont mouez eun den

Anavezet barz er barrez

'Vit eul lounker *beterabez*.

Prim d'an armou, 'me Yvonik,

En han' Doue spontomp Laouik!

Rag me hen goar dindan he fri

Euz meur a vanne *cholori*.

Pebez tra ma teuffemp aben

Da zilua mad hor huden!

Ar mevier gand he bec'hejou

A dostea a nebeudou:

Euz he c'hinou ne goueze ken

Nemed *kurun, mallos, bosen*,

Ha c'hoaz kalz komizou livet-fall,

Goest mad da lakat eun den dall

Da velet skler e meur a dra,

Hag a dle chom kuzet out-ha.

P'edo erru var hed-ten,

Yvonik a gomz evellen:

Hem! chom a zao, den disakred,

Heur d'ha varo a zo sonet;

Ke d'an daoulin, goulen pardon,
Araok m'az-i da anaon.

Ha kercent daou ghr var ho bant

Var diou c'hreunen a gouez stank-stank.

Paon! paon!... Pardon, pardon, tud vad

Biken mui ne rin re govad;

Lezit ganen, en han Doue,

List, list, list ganen va bue.

Petra r-foult, eme Yvonik,

N'eo ket c'hoaz diskennet Laouik?

Dha dro eo breman, Ian-Vari.

Var da fusuil jas pa ghiri.

Ian-Vari a zo eun tam lent,

Mez jasa reaz evelkent,

Hag euz he fusuil karget kloz,

Ez a daou denn hag a ra kroz....

Ar mevier kez a zo semplet,

Ep m'en deffe Sintou tennet,

Rag he fusuil, peur liesa,

Ve goulanter pa dle tenna.

Spouren grim d'ar botred d'ho zro,

Bete goud ne vefte maro.

Hag Yvonik da Ian-Mari:

M'ez aon ne mout ket o c'hoari?

E leac'h tenna barz en er,

Red ma peffe tizet he ler,

Kret, m'ar kerez pe n'am c'hret ket?

Eme Ian-Vari trufulliet,

M'em boa bizet var al loar,

Ha Laouik 'voa var an douar;

Rag-ze eta, eb mar ebed,

Te a rank beza hen lazet.

Ma pije diskaret d'an douar,

Eur c'heffelek pe eur glujar,

Fouge en-out, evel Sintou,

Te ne nac'hjez ket da dennou.

An holl her goar te a sko fall;

C'heuz ket a sounj, en deiz-all,

O klask tenna var glujiri

E poa goullet dha ghi?

En eur vizal d'al loar breman,

Red mad m'a pe lazet an den-man.

Etre m'edon' daou chaseer

O klask piou voa bet ar muntrer,

An den semplet divorfilet

Hag he holl vin ganthan kollet,

A n'em denn ac'hano a-diz

En eur starda mad he c'houriz,

Ha var he lerc'h, eb sellet tam,

E rank leuskel avel bep lam.

Mez abaoue, me her gouarant,

Ne zail mui var ar *gwin-ardant*;

Tremen ra vit eur melezour,

Skignet e breuniez-an-dour.

Nal kenbeud' gand ho levriou,

Nal kenbeud' gand ho c'horzou,

Ne ouffent biken dont a-bein

Da gabut talvoudgez eun tenn.

T. B.

Hano ar Zant evit ar Sizun-ma.

DILLUN 4 MEURS. — Sant Casimir.

DIMEURS 5. — Sant Guenole, abat.

DIMERC'HER 6. — Merc'her al Ludu.

DIZIOP 7. — Sant Thomas Aquin, doctor eus an Ilis.

DIRGUENER 8. — Circunen spern hor Zalver.

DISSADORN 9. — Santez-Franseza, intanvez.

DISSUL 10. — Kenta sul ar c'hoariz.

An Abostol hirio:

Hag breudeur, an ali a roomp deoc'h eo ne recevet
ket gras Doue en aner. Hen he unan a lavar: ho silaouet
em euz en amzer a drugarez; ho sicouret em euz en de-
veziou a zilvidighez. Hogen setu ama brema an amzer
a drugarez; setu ama derveziou a zilvidighez. Na roomp
goal skuer ebet da zen, evit na gavo den abeg er garg
so roet deomp. Mes en em ziskuezomp e pep tra evel
tud o deus recevet ho c'harg digant Doue, o c'houzaon
sioul ar poan'ou, an dienez, ar brassa nec'hamanchou;
o c'houzaon beza goullet, taolet er prizonion, iskinet;
o labourat aketuz, o veilla, o iun; dre eur vuez chast,
dre hor gouezieguez, dre eun dousder paduz, dre hor ma-
delez, dre frouez ar Speret-Santel, dre eur guir garantez;
dre ar c'horzou a virionez a brezegomp, dre ners Doue
a so enhomp, dre an armou a justiz evit stourm a ziou
hag a gleiz, e creiz an henoriou evel e creiz an disme-
gansou, e creiz ar brud fall evel e creiz ar brud mad;
evel pa vemp touellerien, ha ni tud eun ha leal, evel
tud divroet, ha ni anavezet mad: evel tud o vervel ha ni
leun a vuez, evel pa vemp castizet, mes ep beza lazet;
evel pa vemp trist, ha ni ato laouen braz; evel peorien,
ha ni o pinvidicat cals re all; evel pa n'on deffe netra,
ha beza pep tra deomp.

(Eil lizer Sant Paul d'ar bopt a Gorinth. vi. 4.) G. M.

AR ZOUAV.

Ar zouav so eur potr dizoursi, mar deus var an douar.
Ober a-ra goap euz an dienez ha zoken eus ar maro.
Netra ne ell he nec'hi; hag hen dare da vervel, e cav
c'hoaz eur guer drol bennag evit diskuez n'en deus
begad aoun.

O tistrei dioc'h Crimee, eul lestr a voue tost dezhan

mont d'ar gouelet. Al lestr a horjelle; an tarziou a zave
da scuba ar pont. Eur zouav a voa eno ha ne ziscoeze
caout tam nec'h. En em staguët oa var bouez he c'hou-
riz oc'h ar skeuilou, evit miret na vije strinket er mor
gant an tarziou. Unan eus ar re a voa en he guichen a
lavaras dezhan:

— Asa, camarad, ema great ganeomp; red eo mont
da eva eur banne d'ar vasin vras!

— Peuc'h! eme ar zouav, petra ra ze; me c'hounezo
seiz-nguënt lur gant ar c'hoari-ze.

— Penaus?

— Me dle seiz-nguënt lur d'ar c'houarnamant, ha
mar deomp er *bidon* bras, kitez!

Ar zouav a zo ijinus; morse ne jom ber. E Crimee
c'hoaz eur zouav a zaveteaz ho buez da eun nebeut
soudardet Saoz a voa o ren eur vanden muleet. Edont
pell dioc'h an teltou pa deuz an hoz varnezho, hag en
em gojont divar ho hent. An erc'h a voa teo, ha ien
oa ken na badet ket. Red e voue chom a za; rag ne
allent ket mont larcoc'h. Ar muleet anezho ho unan a
c'hourvezas e touez an erc'h; ar zoudardet en em zes-
tumaz guella ma c'hellent en ho mantilli. Hogen arag
div-heur goude e vijent maro oll ma na vije deut den
d'ho zicour.

Setu hi dre greizan avel o vondal, o clevet eurvouez o
cana. An ofiser a voa e penn ar Zaozon her galvas. Eur
zouav oa, collet ive divar he hent, mes evel ato e cane
abouez penn. Eun tamig oa crog ar big en he scouarn.
P'oa deut beteg an ofiser:

— Sell! emezha, oc'h ober petra emae'h hu aze-ta?

— O vont da vervel, evel a velit.

— Ha perag e chomit aze da scourri evelse?

— N'omp ket evit mont ken.

— Ha perag ne rit ket eur c'hleuz d'ho coudouri?

— Gant petra?

— Gant erc'h-ta. Hag hen en em lacat da ober bo-
lodou braz a erc'h da zavel an eil var eben. Ar Zaozon
en em lakeaz oll da labourat, hag ep dale e voa eur
voguer savet hag edont er goudor.

— Savetei a rit hor buez deomp, eme an ofiser.

Neuze ar zouav a reas freuza eur c'hasset braz evit
ober tan gantha, hag a c'houennaz eur pot.

— Eur pot da ober petra? eme ar Zaozon.

— Da ober the.

— Ama n'eus ket a zour.

— Nan, mes erc'h so.

Cavet e voue var guein ar muleet peadra da ober the;
hag e tremenjont an noz ep re a boan.

Ar zouavet zo guest da ober a bep seurt taoliou. En
Afric, eur c'holonel zouavet en doa laket claouestre oc'h
colonel eur rejimant a linen e lacaje unan euz he botred
da laerez he lein dezhan epad ma vijet oc'h he aoza.
Eiz dez amzer a voue roet dezhan. Colonel ar rejimant
a linen en doa laket daou zapeur da zioual he gueguin
epad ma labourer he gueguiner. An trede dervez e
tigouezas d'an daou lam ruz, da vare lein, eur bedouin

var varc'h gant eul lizer d'ar c'holonel. Hema a deuas da guemeret al lizer. Hoguen dres marc'h ar bedouin a gomansas da fringal, da rual, da vont var adren, en hevelep doare ma zeas var he guiz en dinel. Ar bedouin a voue discaret gant he varc'h e kichen ar podou pe ar c'hastolorennon. An daou zapeur, ar c'heguiner, ar c'holonel he unan a deuas da zicour ar bedouin. Paket e voue he varc'h; rei a ellas neuze he lizer, ha kercent e pign adarre var ar marc'h, hag hen kuit d'an daou lam evel ma voa deut.

Pa zigoraz ar c'holonel al lizer e cavaz ar c'homzouma :

« An hini a roi al lizer-ma deoc'h, hag a guemeret evit eur bedouin, a zo unan eus va zouavet. Brema ema en hent gant ho lein, hag ho pedan da zont ama hag ho pezo ho lod anezhi. »

Buan ez ejot da zellet er c'hastolorennon. En unan anezho e voa laket eur pezh mean; mes tam bouet ne voa e nicun anezho. Lein ar c'holonel a ioa (*chopardet*) laeret brao ha kempen. G. M.

KELEIER.

An Aotrou Rouat, person an Trevoux, so maro en dervezou-ma.

An 28 a c'huevrer e tle beza bet eur solanite vraz e kear Amien en honor d'an Aotrou'n Escop Daveluy, merzeriet e Corez. Conta a reat var bemzeg etre Cardinalet, Arc'heskep hag Eskep. Aotrou Escop Kemper so eat d'ar zolanite-ze, hag ive an Aotrou Alexandr, rener *Brewriez ar Feiz*.

An trede varnugent a vis meurs, retred brezonec evit ar voazed, e Kemper.

Ar pemzeg a vis c'huevrer ez eus diblasat adarre seis Missioner eus a di ar missionou diaveaz bro; tri anezho a ia d'ar C'horec hag ar pevar all da Saigon.

Mont a ra ato tud iaouang euz a Frans da Rom d'en em lacat en arme ar Pap. Euz a douez ar zoudardet ez a evel euz a douez ar re all.

En enezen Cephalonia, unan euz an enezi hanvet Ionia, e Gres, eus bet eur c'hren-douar hag en deus great eals droug. Diou guær ha meur a di var ar meaz a zo distrinet. En enezen ez eus pevar-ugent mil den, hag oll emaint ep ti nag oz, na dillad, na bevans. An enezennou all divar dro so bet hijet ive eun tamig, mes n'eus ket great a zistruch enho. Pe guer fall bennag ma voa an amzer ha pe guer rust bennag ma voa ar mor, martolodet Frans n'o deus marc'hatet da vont da gas sicour dezho.

Ar belerinet a ia d'an douar santel a dle diblas a Varseil an nao varnugent a vis meurs ha digouezout e Jaffa an deg a viz ebrel evit tremen goueliou Pasc e Jeruzalem. Daou briz a zo, trizec cant lur pe unnee cant lur, dioc'h ar reng a guemerer el lestr.

Al lestr braz *Great-Eastern* a ziblasso an ugent a vis meurs euz a Liverpool evit commans treizia tud etre Brest ha New-Iork (*Americ*).

Diblas a rai euz a Vrest evit mont da New-Iork, d'ar zadorn, 27 ebrel. — D'ar meurs, 4 even. — D'ar iaou, 11 gouere. — D'ar zadorn, 24 eost. — D'ar meurs, 1^a here. — D'ar iaou, 7 du.

Diblas a rai euz a New-Iork evit Brest, d'ar meurs, 9 ebrel. — D'ar iaou, 16 mae. — D'ar zadorn, 22 even. — D'ar meurs, 30 Gouere. — D'ar iaou, 12 guengolo. — D'ar zadorn, 19 here. — D'ar meurs, 26 du.

An treiz a gousto pe 500 lur, pe 625 lur, pe 700 lur, dioc'h ma vior lojet. Laket e yezo kirri tan da zigouezout e Brest evit diguemer ar veachourien.

En Escopti Sant-Briec ema ato ar c'holera e lec'hien-nou. Ervez cazetennou Sant-Briec, ep ober distruch, ar c'hlenvet a dag ato tud e meur a barrez.

Eur Mission, roet e parrez Plongrescant, e costez Treguer, gant daou dad a Gompagnunez Jesus, eus a Guemper, en deus great eur vad vraz er barrez-ze. Den n'en deus manket d'ar Mission, eme ar gazetenn *la Foi Bretonne*, petra bennag ma voa ere'h ha scorn en dervezou-ze.

Daou vignon a ioa o vont gant an hent, hag unan anezho a zigonezas dezhan lavaret d'eguile : asa, ha cridi a res-te ema Doue e pep leac'h, evel ma leverer ?

— Ia sur, cridi a ran.

— Hag he velet ec'h eus-te ?

Ar c'hamarad en doa feiz a lavaræs neuze d'eguile en eur ziskuez dezhan eur vilin avel a voa dirazho :

— Ha gaelet a res-te ar vilin avel-hont ?

— Ia, gaelet avoale'h.

— Petra laca anezhi da vont en dro ?

— An avel-ta.

— He velet ec'h eus-te ?

Setu penauz ec'h eller respont peuplicssa d'an dud difeiz. G. M.

PRIZ AN EID.

KEMPER. — 23 C'huevrer.		PONT-NABAT — 24 C'hue.	
<i>Priz ar c'hant tiour.</i>		<i>Priz ar c'hant tiour.</i>	
Guinis....	45 lur, 28 c.	Guinis....	45 lur, 40 c.
Segal.....	9 lur, 07 c.	Segal.....	9 lur, 63 c.
Eiz.....	9 lur, 54 c.	Eiz.....	9 lur, 88 c.
Ed-du....	7 lur, 43 c.	Ed-du....	7 lur, 82 c.
Kerc'h....	9 lur, 83 c.	Kerc'h....	9 lur, 50 c.
Avalou-douar	4 lur, 50 c.	Avalou-douar	4 lur, 75 c.

Ar Gerant: AR. DE KERANGAL.

Kemper, moulet gand AR. DE KERANGAL, Moaller an Es copti.

FEIZ HA BREIZ,

KLEOU A BEP BRO, HA KENTELIOU VAR BEP TRA,

DIGASSET BEP SUL

Da guement Christen a goms ar brezouneec.

Un Abonnamant d'ar Gazeten a goust :

- Evit eur bloas..... DAOU SCOUET.
- Evit c'huic'h miz..... EUR SCOUET.
- Evit tri miz..... C'HUEC'H REAL.
- Eur gazetenn ebken..... DAOU VENNEC.

Ar baec'mant a dle beza great araog caout ar gazetenn.

ALIOU.

Ar scrijou a ve c'hoant da lacat er gazetenn a dleer da adressi oll d'an Aotrou MORVAN, Beleg e Kemper.

Ar pacamanchou a dleer da adressi d'an Aotrou SALAUN, ebken. An abonnamant a guemerer e ti an Aotrou SALAUN, librer, ru Kereon, e Kemper.

KEMPER, 9 Meurs 1867.

MANDAUNT

AOTROU ESCOP KEMPER HA LEON,

Evit Coraiz 1867.

RENÉ-NICOLAZ SERGENT,

Dre c'herc'h Doue hag hon Tad Santel ar Pab, Escop Kemper ha Leon; hag unan euz an Eskibien hanvet gant PII IX, da azeza e kichen he Dron, d'ar Veleien ha d'ar Gristenien fidel eus hon Escopti, salut ha benediction hon Zalver Jesus-Christ.

HOR BREUDEUR KER,

Evit digueri an amzer santel euz ar C'horaiz, ne viot ket souezet oc'h hor c'hlevet o rei deoc'h ar memes kentelioù a roe sant Paul d'he ziskibl Timothee : *Dont a rai eun amzer, eme an abostol braz-ze, hag an dud ne c'houlzavint mui eur gaeleñnadurez iac'h ha guirion; destum a raint en dro dezho mistri ervez ho c'hoant, distrei a raint ho dioucouarn dioc'h ar virionez hag ho zoint varzu rimadellou.*

Hirio, a bep tu hag e pep guiz, e rer ar brezel d'ar c'hredennou sacr revelet gant ar Speret-Santel; d'ar c'hredennou o deus roet ners d'ar verzerien, skiant d'an doctoret, vertus d'an dud a zoujans Doue; d'ar c'hredennou-ze miret dre c'hallout an iliz adreus ken aliez a vloaveziou, a vroioù hag a rumoù tud; d'ar c'hredennou coz-ze a bere e teu ato pep guirionez, pep peoc'h, pep frealzidiguez pe gonsolation.

Eur zec'bet divoder evit plijadurezou ar vuez, eur garantez dall evit madou an douar, an dallentez d'en em lezel da yeza tromplet gant traou hag a dremen evel eur skeud, a ra d'an dud ancouñac'haat ar madou guirion hag eternal. Caer so kelen a vonez huel ar gristenien, e tesker ato dezho traou danjeruz, e skigner muioc'h vui

en ho zoeuz levriou, scrijou contamet; ar pezh a c'hourdrous lamet digantho ar c'hrizien a vuez e deus bete vrema roet ners d'an tiadou tud ha gallout d'ar bobliou. Mar fell deoc'h en em viret oc'h an danjerou-ze ha chom ep mont da goll, dalc'hit mad d'ar feiz dre c'hallout pehini ec'h assant an den a greis calon d'ar guirioneziou revelet gant Doue.

An eurusdet a dle an den da glasc evel he fin diveza, a so ken huel, ma ne ellomp ket he dizelei dre hor sclerijen hon unan. Red oa eta, evel ma tesc deomp ar Sened a Drant, e teuje Doue he unan da rei deomp an anaoudeguez anezhi. Hoguen, an anaoudeguez-ze eo ar feiz. Er feiz ema, diguemesc, kement guirionez a zesc an iliz santel hor mam d'he bugale evit ho renta stard er memes creden hag er memes speret.

Ar re pere n'en em lakeont nemeur e poan eus ar vuez all, ha ne zougont ket ho zonc'h larcoc'h evit traou ar bed-ma, a ra eur sazi braz hag a vress dindan ho zreid ho c'haera guirion. Ne zonzont ket penaus pa zeo Doue re vraz evit ma c'halfemp he gompren, he visteriou hag an doare ma en em guemer evit hon ren a zo ive re huel evit hor speret, ne dleomp ket ho c'hompren muioc'h.

Evelse pa eo bet sevenet ar professiou, pa eo dent an amzer da garantez map Doue evit an dud d'he zigas en ho zoeuz, e fell dezhan guenel en eur c'hraou ha mervel var eur groas. Lacat a rai da zoubla dezhan ar brinset hag ar rononet, ar sperejou brassa eus ar bed, discar a rai an idoloù, lacat a rai ar bobliou da chench buez, da ren eur vuez divlam cleac'h ho buez mezus diaraog. Gouscoude evit ober eun dra ker burzuduz ne guemero ken benviachou nemet pesketerien paour ha dister.

He caout a rafet eun den pehini, o fallout dezhan ober lezen d'an oll dud, ho lacat da ziguemeret he gaeleñnadurez, ho lacat da zenti outhan, en em laefe da guenta da rei dezho da gridi misteriou ha ne gomprenont ket, da lavaret dezho e rancont enebi oc'h ar pezh ma zint douguet dezhan, hag evit dont abenn euz he venoz, a

zibable d'he zicour tud dezese, tud dispriget? Den, ep mar, ne zouchfe ober eun dra evelse; ar zouch-ze ne deufe esperet den, ha pa vije deut, ar zouch-ze, pa vijet eat da glase her c'hass da benn, a vije eat da netra. An den en divije bet eun hevelep sonch n'en divije tenet anezha nemet disnegans ha goaperez. E guirionez penaus tizout eun termen ken huel, oberou skignet e pep leac'h, gant traou ken dister, ken dic'hallout, ker control d'ar pez a voa c'hoant da ober? Kementse a ziskuez ez eo sonjou Doue enzet ouzomp; he Brovidans epken ho anavez, hi epken a ell ho ren hag ho lacat da vont da benn, evit diskuez selear ema he oberou dreist gallout an douar, ez int dreist naturel hag e tougont ar roud, ar mere euz he oll-c'hallout hag euz he oll furnez.

Ma en divije hor Zalver, evit gounit ar bed, evit ober ar burzudou en deus great, choazetar re fur eus ar Gres, e vije lavaret eo dre skiant an dud fur-ze eo en divije great he vuzudou; mar en divije kemeret armou Alexandr ha Cezar, e vije lavaret eo dre ners ar re-ma eo en divije ho great. Cavet en deus guelloc'h choaz ar pez zo a izela, en em harpa var ar pez so d'nersa ha disprijapla, evit diskuez ners an Aotrou Doue, evit rei da anaout eo hen epken braz hag ema e pep leac'h.

Ar re a zisprij an douezou pristuz eus ar feiz, ne fell ket dezho sonjal a zevri e netra. Ma rafent e vellent penaus mar deo avoalc'h buez ar c'horf d'al loenet mud, ne deo ket avoalc'h, calz a vane, d'an den. He ene ne dle morse mervel a dle ive guelet, clevet, tanva, santout ha touch. Sant Augustin a ro da anaout ar virionez-ze pa lavar: « Petra garan eta, va Doue, pa ho caran? Ne deo ket guenet eur c'horf eo, na sked eur sclerijen a ra plijadur d'an daoulagad, nag an dudi o clevet moueziou eac'h, hag ar c'huez mad eus al louzeier hag euz ar bleun, nag ar man hag ar mel, na netra eus ar pez a ell plijout etouez traou mad ha c'hoec an douar. Ne deo nicun euz an traou-ze: ha gouscoude ez eo evel eur sclerijen, eur vouez, eur c'hoec-mad, eur bouet ha me ne ouzon ket c'hoas pe seurt tra vad hag a garan, hag a danvaan el loden-ze ac'hano va unan a zo oll diabarz euhon ha ne aller ket da velet gant daoulagad ar c'horf. Eno e par oc'h daoulagad va ene eur sclerijen ha ne deus ket a dermen, eno e clevan eur c'han melodiuz ha ne ell ket an amzer da lacat da eana, ac'hano e sao eur c'hoec mad ha ne da ket da goll en ear, eno en em vagan gant eur bouet a vuez, hag evidon da gaout naoun ne ellan nag he zistruja nag he vibanaat, eno en em stagan muioc'h vut oc'h eur virionez infimant din da veza caret ep ma'm bese morse va goalc'h eus ar plijadur hag an dudi gant pere eo mesvet va ene o caout ar virionez-ze en he c'hers. »

Ar splusen, dindan ar groc'hennic tano he golo, so enhi eur vezen hag a roio he skend hag he frouez; ar mez a vressit dindan ho treit, a savo da veza guez dero a c'holoio ar c'hoad gant ho scourrou hir ha teo; ar bleuniou a ro guiscamant vrad d'an douar, an edou a ro pinvidiguez, a deu euz eur c'hreunen, eun haden dister ha cuzet. An traou-ze ar re nebeuta desket ho anavez hag

ar re desketa ne allont ket discleria penaus e tenont. Ar memes tra a c'hoare evit ar feiz; bez'ez eo eun had cuzet, hag enha ema gouscoude euz an oll c'hloar a esperon an eternite d'ar rezalvet en eurusdet Doue he unan.

« Zom on eus da dremen die ar feiz, da lacat ar feiz d'hor zicour; abalamour ma zeo varnezhan eo fontet, diazezet an traou a d'laer da esperout, ha ma tiskuez ar re ne veler ket... »

Great omp evit ar feiz en eun hevelep doare, ma teomp da goll an traou guirion a deu digant Doue, e reomp dioc'h tu, ep gouzout deomp, diguemer da skeud an traou netra a deu eus a leac'h all. Goude oll ne deus heretig ebet, micun eus a re o deus eur fals-creden, eus ar re ne fell dezo cridi nemet ho froudenno, ne deus nicun anezho ha ne grette cals traou ep ho beza guelet, ep beza pleustret na gouezet petra int ha perag emaint.

Plijadur a raimp deoc'h, hor breudeur ker, o verca ama c'hoas comzou Escop braz Hippon evit displega, rei da anaout ar zouch gaer-ze. Er c'huec'hvet levr eus he Confessionon e trugareca Doue evelen: «

« Ho torn madelezuz ha trugarezuz o veza dent da skei var va c'halon, e lakejoc'h ac'hano da zonzal, o va Doue, peguement a draou, ep niver a ellan da lavaret, a greden ep beza ho guelet morse, traou zoken hag a ioa tremenet araog m'oa deut var an douar. Nag a draou digouezet pell zo a lenner en histor ar bobliou! Nag a vroion, nag a garion eleac'h n'oun bet morse! Hag e creden kementse dalc'h mad var desteni va mignonet pe re all, hag an testenion-ze zo red cridi dezho, pe e ve red en em denna eus a douez an dud. »

Ar c'homzou-ze, hor Breudeur ker, so comzou a bouez, hag assur eo, ne ket epken e vef an den guirion dre ar feiz, evel a lavar an abostol, mes c'hoaz e elasc pep ene ar vagadurez-ze. Kement den so, kement broiad-tud so a gred cals a draou ha ne aller ket ho displega, ho diskuez selear.

Ar c'hristen en deus da gridi misterion hag a so hueloc'h evit he rezon: eur virionez eo hag a anzaou, euz a behini en em fougue hag en em c'hlorifi, ha ne ket ep abeg; rag mar cred, ne deo ket dre scanvadurez; gouzout a ra ez eo diskuezet selear ar virionez eus ar pez a gred, gant testou sur, dindan guer ha gallout an Iliz a eller ato da velet. Gouzout a ra e sav he relijion hueloc'h evit ar reson, hag evit delec'her leac'h d'ar pez a vane dezhan dioc'h an tu-ze en deus ar profesion, ar miraclo, ar verzerien, ar guellennadurez ep scrit pe an dradision, ar scrituriou sacr, hag an Ilis. Eul laouenidiguez eo evithan, evel ma voa evit Richard a Sant Victor, gallout mont ep aoun da varnediguez Doue. Lavaret a ra evel an doctor mad-ze: Aotrou, ma ne vije ket guir ar pez a gredomp, eo c'hui a vije da damal, rag an traou-ze so diskuezet ha prouvet dre viraclo ha dre vuzudou ker bras, ma zeo c'hui epken a ell ho beza great.

Falvezet eo d'ar Brovidans divin e vije stard hor feiz, ne vije netra evit hen discar, en divije an nerz ar vrassa.

Kementse a anavezot, hor breudeur ker, mar sonjit penaus ez eo form ha sur abalamour ma zeo diazezet ha fontet var goms Doue he unan; pe e c'hiz all, ar guirionezou-ze so sur abalamour ma zeo Doue eo ho desc, ha kement a so er scritur a so desket ha revelet d'an Ilis gant ar Speret-Santel. Ar pez a ententomp; eme Sant Augustin, a dleomp d'ar reson, mes ar pez a gredomp a deu abez an hini en deuz ar c'hallout. Evelse an abostol Sant-Paul, o comz oc'h ar hopt a C'halat, a lavar dezho ep penn kenta euz he lizer: *Hen discleria a van deoc'h, an Aviel am eus prezeguet deoc'h ne deo ket ervez an den. Ne ket digant eun den em eus he recevet, ne ket eun den en deus he zesket din, revelet eo bet din gant Jesus-Christ.* E meur a leac'h en he liziri e tistro da gomz euz ar virionez-ze, dreist oll en eil pennad euz he lizer da guistenien Thessalonic. *Trugarecat a reomp Doue abalamour, o veza recevet he gomz oc'h eus clevet ganeomp, oc'h eus hi recevet, ne ket evel eur gomz abers tud, mes (evel ma zeo e guirionez), evel coms Doue pehini a zoug fiquet en hoc'h dre ma oc'h eus diguemeret ar feiz.*

Er magreden desket evelse a so eta sur ha ne ell ket mancout muioc'h evit an Doue abers pehini e teu. « Derbat oa evije evelse. Ar vuez christen oll o veza diazezet var hor feiz, oa red mad e vije ar feiz sur, ep douezellet ar pez ne alje ket beza pa nefe ma teu digant an c'hloar guirionez, da lavaret eo digant Doue he unan e pell hini ne ell ket beza an distera errol.

Sed plijadur Sant Paul a c'half ar feiz an diverradur, an eil fons eus ar pez ne veler ket. Morse ne allimp meuli avoalc'h madelez infim hor C'hrouer da veza roet deomp an scolijon assur-ze e creis ar mor leun a guerreg cleac'h ma on eus da verdei araog digouezout er pors. Sperec'haer tenvaleat dre ar pec'het, ne gave mui he henta a vuez ebet diskuez avoalc'h eo ken aliez a greden d'vilo, ar relijion griz, a idolo, mezuz azenlet (adoret) e kement leac'h ne deo ket deut da bara sclerijen gaer an Aviel. Nicun all nemet Doue ne alle deski deomp petra so red da gridi, petra so red da ober, nicun all ne alle deski penaus e tleer he tenori hag he zervicha.

An d'is pinvidic, eus a vouelet an ifern, a bed Abraham da gas Lazar da di ho dad. Chomet ez eus eno var he d'erc'h pemp breur, hag en deus c'hoant e ve lavaret dezho pe seurt poaniou scrijuz en deus da c'houzaon, evit ha deunt ket ho unan d'al leac'h-ze a dourmancho. *Bez o deus Moizes hag ar Brofetet, eme Abraham, silaouent hi.* — Mes eme an den collet, ma zafe unan eus ar re varo d'ho c'hlaout, e rafent pinijen. Abraham a respont: *Nan, ma ne zelaouont na Moizes nag ar Brofetet, ha pa zafe unan eus ar re varo da veo, n'her c'hredint ket.*

« Ha c'hui, mar grit fae var guirionezou ar feiz, petra gredot-hi? »

Ar peza outzoc'h divar benn an Dreindet Santel, divar benn incarnation Map Doue, divar benn ar pez a zeil oc'h santelez ar re zalvet hag oc'h coll ar bec'herien, a deu eus ar pez a voar Doue he unan var guementse. Evelse Sant Paul e lavar ep aoun e prezeg furnez Doue,

furnez, emezhan, *hag en doa Doue sonch da zigas araog an oll amzeriau.* An hini a vale ganthi, en em gaf hueloc'h dreist-ha he unan. Savet en euz ear iac'hoec'h e tesc anaout, santout ha labourat en eun doare ha ne ket henvel oc'h hini eur bed faenz ha tromplus.

Er seol divin-ze ar buguel so maguet evel ma tle beza; an den iouane a vel oc'h petra e tle en em viret, an den a vel petra die da ober, an intanvezet hag ar vinoret a gaf sicour ha scoazel, ar rouant ha barnemen an douar so desket ho deverion dezho. Ar seol-ze a viana c'hoer-der ar re so en noc hamant, hag ive plijadur ar re so el levezet; rei a ra carantez d'ar pinvidig ha bara d'ar paour.

An oll a voar pe guer ber eo en em gavet ar sperejou brassa pa zint bet lezet gant ho skiant ho unan. An nebeudig guirionezou o deus gallet da dizout a ziskuez deomp avoalc'h pebez kem a zo etre an tamonigou guirionez-ze henvel oc'h truilhou, dishenvel an eil dioc'h egnile, morse sur, morse selear, e deus gallet ar rezon da zizelei goude poania avoalc'h ha pell amzer, pebez kem a zo, a lavaran etre an truilhou paour-ze hag ar guellennadurez leun a ro deomp ar feiz gant kement a larguentez hag a sclerder.

E guirionez, evit ar broiou a sclerijenont hag ar vad a reont, piou a grette lakat keit ha keit ar virionez a zigas deomp hon rezon epken hag an hini a deu deomp digant Doue? Ha lakat a allet kem ha kem eun dra lakat dirag bolontez an den evel eur virionez naturel, hag eun all hag a ziskuezer dezhan evel eur virionez dreist naturel ha ne ell ket fazia?

Ep niveri ama ar pez a ro d'ar feiz ar gounit hag eur reng huel dreist ar rezon, eo avoalc'h sonjal ez eo ar feiz ar sclerijen a dle cass etreze Doue hon esperans hag hor c'harantez. Evelse ar Scrituriou Santel, pa leveront e vef an den guirion euz ar feiz, a fell dezho lavaret eo dre ar feiz e ro Doue dezhan ar vuez spirituel pehini eo ar vuez guirion hag eternal.

An hini en em ziazez hag en em harp var ar feiz a so henvel oc'h an ti-ze savet var ar roc'h calet, a behini e comz an Aviel; nag an arneu, nag an dour beuz, na trubuilhou ar bed ne allint he ziscar. Kemeret avad ar rezon epken evit diazez, a so sevel ti var an treaz-nij, hag ar c'henta sourrat avel, an distera trubuil a vezo avoalc'h evit he bilat.

An amzer a ia da zigueri a c'houlou digancomp santimancho a binijen hag a zistro ous Doue. Echui a raimp eta ar guellennadurez-ma en eur lavaret penaus mar en deus ar feiz gallout avoalc'h evit delec'her beo an den just, en deus ive nerz avoalc'h evit digas buez er pec'her. Poulzet ha renet gant ar feiz e sao eus he gousk, eus he gousk a varo, hag e kers d'en em lacat e stad da antren e gras gant Doue.

Arabat eo sonjal e rafe ar feiz epken eur c'hristen mad eus a eun den; an errol-ze eus a z sk'biën Luther so bet condaonet. Red eo caout d'posicion all, red eo e rafet oberou mad. Er Sened a Dant e cavomp niveret an traou-ze. Ouspen ar feiz, ar Sened a c'houlou

digant an den douja barnediguez Doue, esperout en he drugarez, kaout keuz d'her beza ofanset, caout carantez evithan, beza e mennoz (e resolution) da reseo ar zacramanchou, da jench a vuez, da viret gourc'hemennou Doue.

Ar feiz eo an diblas kenta evit an oll oberou ha santimanchou-ze dre here ez ear etrezeg ar c'hras. Sant Augustin a vere caer kementse dre ar c'homzou-ma : *Ar feiz so roet da guenta, ha dreizhan e teu an nemo-rant.* Ha Sant Prosper a lavar ouспен : *Var ar feiz eo diazezet ar stad a c'hras, hag ac'hano e teu pep tra.*

Ar c'hreg ma comz an Aviel anezhi a guemer eur c'houladuen da glasc ar berlezen brisiuz e deus collet. Sclerijen ar c'houladuen-ze a ra dezhi guelet kement so en he zi hag a ziskuez dezhi dre he hent mont. Evelse a ra an ene : Kemeret a ra ar c'houladuen eus ar feiz evit scleraat an diabarz anezhi, evit bleinia he bolontez ha clasc an tu da gaout adarre ar c'hras e doa collet.

Pa zistro ar pec'her oc'h Doue, eur sclerijen dreist naturel a deu da guenta da scleraat he speret ha da lacat dirag he zaoulagad eur virionez vras bennag ; evel, an amzer eat ebion, ha collet evit bepret ; ar maro hag ar varn pere a denio sur ; justis Doue ; buez, passion ha maro hor Zalver ; he drugarez pehini a scuil var ar pec'her a zistro.

Pa grouas Doue ar bed, kenta tra a fellas dezhan da groui, oue ar sclerijen. Lavaret a reas : *Ra vezo great ar sclerijen !* Ha kerkent ar sclerijen a zavaz euz a netra. Evelse ive evit nevezi eun ene, kenta tra a c'houlen eo ma vezo great sclerijen enhi. Evel pa lavarfe : ar c'houladuen-ze so mouguet, me fell din e ve elamet adarre ; ar feiz-ze a voa eat tenyal dre ar pec'het, me fell din e tufe a nevez da veza skedus. Lacat a ra eur sclerijen da bara, hag an ene a vel neuze gant spont peguen doun eo an toul-long azioc'h pehini ema, hag e clasc en em denna eus an danjer a ra aoun dezhi.

Evit kementse ec'h implij ar zantimanchou mad a zoujans, a fizians, a c'hlaç'har, a garantez gourc'hemennet gant an Iliz, hag en doare-ze ar feiz a zigas ar pec'her d'ar stad a c'hras, ne ket dreizhan he unan nag he unan epken, mes dre an dispositionou a zigas dezhan ha dre an oberou mad a laca anezhan da ober.

Guelet a reomp dalc'h mad ar Scritur-Saer o lavaret eo ar feiz eo a laca ober an oberou a drugarez ha kement a rer er guel euz ar zilvidiguez eternal, ar feiz a behini ar meritou en em skign e pep leac'h evel ma tiskuez Sant Paul en he lizer d'an Hebreanet.

Ep ar feiz, eme an Abostol, ne aller ket plijout da Zoue ; rag an hini a dosta outhan a die credi ez eo, hag e recompans ar re her c'hilasc.

Goude beza great eun daolen ar gaera euz ar Batriarchet hag eus ar Zant gant ho oberou hag ar burzudou o deus great, an Abostol a lavar c'hoas : « Pa zeuz eta en dro deomp eun hevelep coabrennad testou, taolomp kuit ar beac'h euz hor pec'hejou hag ar zam zo var hor c'hein ; redomp, dre ar binijen, d'ar stourmad a guin-guer deomp en eur zele'her hon daoulagat var Jesus

e pehini e comans hag ec'h echu ar feiz. Greomp hor mad gant an oll sicourou a guinnig deomp evit ober hor zilvidiguez. Tostaat a reomp oc'h an eteriite, ha dalc'h mad e velomp unan bennag eus ar re a vale en hon raog o coeza enhi pa zontent nebeuta.

Dont a ra an noz epad pehini den ne ell labourat. Hastomp afo labourat epad ma zeo c'hoas selear an deiz. Hor bezet eur feiz beo evit ma c'hevessaimp pe guen doun eo ar gobliou eus hor c'honstians, evit ma scu-bimp eus hor c'halon oll roudou ar pec'het, ma savimp adarre ar pez en deus discaret, ma tistrujimp he ren, ma teuimp da veza treac'h d'hor goal ioulou, ma lacaimp da greski enhomp speret Jesus-Christ, oc'h en em rei d'ar vertuziou a c'houlen diganeomp hag a bere en deus roet he unan ar skuer ar c'haera. Evelse eo e vevimp eus ar feiz, hag ec'h anavezimp pegument a nerz en deus evit hor c'hendere'het e stad a c'hras, mar emaomp er stad-ze, pe evit hon digas d'ar stad eurus-se mar d'omp pec'herien.

E pep cantvet eo bet guelet an dud difeiz oc'h ober ar brezel d'ar guirionezou revelet gant Doue, mes ato o deus collet ho foan. Ar brezel-ze zo bet great e pep guiz, e pep doare, dre bep seurt ardou.

An dud difeiz euz hon amzer a nac'h kement so discleriet gant Doue, n'eus fors pe guen anat mercou a ve en defe ho discleriet. An doare-ze da nac'h n'en deus diazez ebet, hag ar re her gra a ziskuez caout c'hoant da ober traou diskiant ha danjerus. An dud-ze n'eus ken hano gantho nemet da vont ato var araog, ha n'eus gouscoude netra hag a enepfe muioc'h oc'h ar pez a fell dezho. Skianchou ar bed-ma zoken ne affent ket beva nag en em zispaca, ma n'o defe ket ar re ho studi, evit diblas, evit en em harpa, lezennou, guirionezou recevet ha diguemeret gant an oll araog pep barnediguez.

Goude oll, an den gouezieca eo an hini a anavez mad, sur, an niver brassa a virionezou, hag ho diguemer, hag ho c'hred starta, gant nebeuta douet.

Nac'h eur virionez, dreist oll pa vez eun dever stag outhi, serra he zaoulagad ha stanca he ziscouarn oc'h ar pez a elle hon lacat d'he c'hridi, evit silaou epken ar pez zo en he enep, evit sellet epken oc'h ar pez a deu d'he zentral, kementse, evel a lavar eur guir filozof, a so ober evel Felix, proconsul a Rom. Hema en devoue plijadur da guenta o silaou prezeguen gaer Sant Paul. Mes pa deuas an Abostol da gomz eus ar chastete, eus a justis Doue, eus he varnediguez, neuze Felix en devoue aoun hag a reas dezhan tevel, en eur lavaret : *Avoalc'h evit brema. Il alesse, ha pa'm bezo amzer me gasso d'ho clasc.*

Evidoc'h-hu, hor breudeur ker, c'hui a zigoro oc'h eneou da guelennadureziou ar Feiz. N'en em lezot ket da veza gounezet gant an dud difeiz, pell dioc'h eno ; euz o pezo oc'h ho fals credennou dizoue, hag e chomot stag mad ha stard oc'h relijion ho tadou coz. Dale hit mad d'ar guirionezou sacr-ze oc'h eus recevet, c'hui dreist oll, tadou ha mamou, mirit-hi da dud ho ti,

ha list-hi gant ho pugale, evel ar pinvidica heritach a gontac'h da lezel gantho. E touez kementse a dro deomp hag a ro adomp a c'hoant em nec'hi, eur zouch a deu en hor jsparet hag aro deomp consolation : *Ar Speret-Santel en deus discleriet e ra vad pep tra d'ar re a gar Doue.* An dud difeiz, a c'houzany an Iliz, an dispac'h a ra an dud difeiz evit he distruja, a gresco he gloar, hag, alhen esperout a reomp, a gresco ive ar vertuz enhoc'h. He touguen a raint da zigas buez en ho Feiz hag en ho c'hevosiou. Sonch o pezo ema nerz ar gristenien er beden, er aluzen, er binijen, hag eo gant an armou-ze o deuz ato pelleat enebourien ho zilvidiguez ha trec'het oll nerz ar re a stourme outho.

Evit ar pez a zell oc'h amzer Santel ar C'horaiz,

ON EUS GOURC'HEMENNED HAG E C'HOURE'HEMENNOMP :

1. Gallet e vezo dibri kig azalec ar c'henta sul eus ar c'horaiz beteg ar meurs eus ar Sizun santel, hag ivez d'ar meurs-ze, d'ar zul, d'al lun, d'ar meurs ha d'ar iaou ; d'ar zul, da veur a bred, ha d'an deverziou all, da eur pred vepken. Ne dleer ket rei kig ha pesked d'ar memes pred. Ar re so dispanset euz ar iun, a ell ive dibri kig ouспен euz ar meurs-ze, d'al lun, d'ar meurs ha d'ar iaou.

2. Gallet e vezo dibri amann, leaz ha fourmach epad ar c'horaiz oll, ha viou bete Dissul Bleuniou, hag ive d'ar zul-ze.

3. Ar gonsessor, aumonierien, personet, a ello ouспен, gant n'her gaint ket en eur feson jeneral, discleriet eo dispanset, ken eus ar iun, ken eus an derveziou all a vijel, ar re o defe eur rezon vad bennag da c'houlen an dispans-ze.

4. Ar permissionou hag an dispansou-ze ne dint roet nemet gant condition ma vezo roet eun aluzen evit cenvrou mad hon escopti. Ar gristenien fidel o devezo sonch e tleont, e plas ar pez ma tousaer evelse dezho al lezen, ober pinijennou all, rei skuer vad o veza aketus da vont d'an oll exercisou a relijion, o veza sourciussoc'h da ober cenvrou a garantez.

5. An aluzennou evit ar c'horaiz a vezo roet d'ar personet, pe autramant tolet en eur c'hef a dlevo beza lakat evit kementse e pep ilis eus hon escopti epad ar c'horaiz hed ha hed. Ar c'hef-ze a vezo scifet varnezhan e lizerennou selear evit petra eo laket. An arc'hbeleien hag ar bersonet canton so pedet da lacat ho digas goude Pasc da zecretour hon escopti, evit ma ho lacaimp da zervichout d'an cenvrou mad a vezo muia izom da ober.

6. Ar bastoret a ello comans Pasc eun nebeut kentoc'h evit an amzer merket gant an Ilis, hag heu asten eun nebeut goude ; ne dleint ket gouscoude, e penn ebet, mont pell diou an amzer merket gant an Ilis.

Hag e vezo ar mandamant-ma lennet a vouez huel e d'ar oferen bred ar sulvez goude ma vezo digouezet er parreziou.

Roet e Kemper, dindan hor sin ha siel hon armou,

ha sin secretour an escopti an 10 a vis c'huevrer 1867.

+ RENE,
ESCOPIKEMPER HA LEON.
Dre an Aotrou Escopi
J. TEPHANY,
Chalon a Renor, Secretour an Escopti.

Rom. — An den venerabl Benec'at a Urbin so bet discleriet euruz an deg a vis c'huevrer, eu ilis Sant Per. Evit ar zolanite-ze ar Pap ne vez ket var al leac'h. Mes al lizer scifet gantha evit kementse a vez lennet dirag ar gardinaled, oll dud a iliz Sant Per, hag eur hopl ep niver. Neuze e vez dizoloet skeuden an den euruz, e losker eun tenn canol evit rei da anaout an nevezinti da oll dud kær, hag e caner an oferen bred. Goude creisdeiz ar Pap gant he gardinalet oc'h he heul, a ia d'an ilis da bidi dirag skeuden an den eurus nevez. Lavaret a rer ez oa c'huac'h ugent mil den er zolanite-ma diveza.

Ervez Almanach Rom ez eus brema en ilis catolic eis cant unan ha tri-uguent escopti. Rannet int evelen : Daouzeg ilis so en ho fenn eun escop hag en deuz ar reng a batriarch. Bez' ez eus neuze cant daou hag antercant arc'hescopti ha c'huac'h cant seiteg ha pevarugent escopti. En Itali ez eus c'huezeg escopti ep eskibien ha c'huac'h hag antercant n'ema ket ho eskipien enho.

Naonet. — Brema ez eus trivac'h miz, eun triad tud a voa deut da jom da Zant-Nazer. An tad hag ar vugale (pevar buguel) a ioa catoliket ; ar vam epken a voa protestantez. An ozac'h a goezas clan, hag ar c'hreg a gomansas digueri he daoulagad d'ar virionez o velet carantez ha madelez unan a veleien ar barrez galvet var dro ar c'hlanvour. Sevel a reas douetans en he speret divar benn he c'hreansou, hag anezhi he unan e comzaz a guementse d'ar beleg. Evel ma voa eun a galon ha ne glaske nemet sclerijen, ar beleg ne voue ket pell evit rei dezhi da anaout ar virionez. Ne vare'hatas ket da guitat he fals relijion ha da c'houlen beza badezet. Ar pevar varnugent a vis guenver, person ar barrez he recevaz en ilis catolig hag he badezas e chapel ar *Seurezet guenn*. Antronoz e devoue an heur da receo he Doue, en oferen da behini e voa deut eun niver braz a dud evit guelet ar zolanite gaer-ze.

He fried a-vouele gant he levenez : « Alo ! emezhan, brema oun contant ; bet em eus digant Doue ar pez am boa muia c'hoant da gaout var an douar. » E guirionez evit ma ve guir unvaniez etre daou zen, eo red dezho ive caout ar memes creden. Evit ma n'o defe daou bried nemet eur galon hag eun ene, eo red o defe ar memes Doue, e petfent dirag ar memez aoter. Plijet gant hor Zalver digas etouez ar guir denvet ken aliez a zanvad dianket, evit ma tanvaint ar peoc'h pehini ne gaver nemet er guir feiz, o viret gourc'hemennou Doue !

(Semaine religieuse.)

neuze tenna ar rodou dioc'h ar c'hirri ha lacat kezeg d'ho zacha a ruz eleac'h ma voa caledet an erc'h gant ar scorn. An tiez a voa goloet, hag an dud a voa red dezho ob er evel punsou evit dont ha mont en ho zi. Guelet eus bet potret al liziri o leskeul ho liziri da goeza en tiez dre ar chiminal.

Taolen euz a dro an Aotrou'n Escop evit Couzoumenni er bloaz 1867.

devezion ar MIZ.	PARREZIOU a vezo roet AR GOUZOUMEN ENHO.	PARREZIOU a dle MONT E LEAC'H ALL.	
Ehbrei.	29 Tregunc.....	Lanriec.	
	30 Consecration an ilis..		
	Mae.	1 Beuzec-Comp.....	
		2 Conkerne.....	
		6 Combrit.....	Tremeoc.
		7 Pont-n'Abbat.....	
		8 Loctudy.....	Enez-Tudy.
		9 Plobannalec.....	Treffiatag.
		10 Penmarc'h.....	
		11 Plomeur.....	
Evez.	12 Sant-Ian-Trolimon..	Treguenec.	
	13 Ploneour.....		
	14 Plovan.....	Treogat.	
	15 Pouldreuzic.....	Lababan.	
	16 Peumerit.....		
	17 Plogastel-S'-Germen..	Landudec, Guilers.	
	18 Ploneis.....	Guengat.	
	Distro da Guemper.		
	20 Ploare.....	Ar Juch.	
	21 Poullan.....	Treboul.	
	22 Pouldergat.....		
	23 Pont-Croas.....	Mahalon, Meylars.	
	24 Beuzec-Cap-Sizun...		
	25 Clédén-Cap-Sizun...	Goulien.	
	26 Plogoff.....	Primelin.	
27 Audiern.....	Esquibien, Enez-Sizun		
28 Plouhinec.....			
29 Plozevet.....			
Distro da Guemper.			
30 Benodet.....	Gouesnac'h.		
Evez.	1 Clohars-Fouesnant...	Pleuven.	
	2 Fouesnant.....		
	3 Sant-Evarzec.....	Ar Forest-Fouesnant.	
	6 Rosporden.....	Sant-Yvi.	
	7 Elliant.....	Tourc'h.	
	11 Sant-Martin Brest...		
	12 Sant-Salver Brest...		
	13 Itron-Varia-Garmez...		
	14 Sant-Louis.....		
	15 Plogastel-Daoulas...		

Euz a Blougastel an Aotrou'n Escop a ielo da Rumengoll hag ac'hano da Guemper. En distro euz a Rom e roi ar Gouzoumen e Plogonnec hag er parrezioù a ganton Kemper hag a ganton Briec.

E kichen Conkerne ez eus cavet eur morvarc'h (baleine). Ar pesc-zé so c'hoas iaouanc, gouscoude en deus tregont troatad hed.

Ar c'hlenvet so e tu ar Beljic var al loenet a so stagus braz, dioc'h ma leverer. Setu ama hag hen diskuez. Map eul labourer douar a ioa bet oc'h ober eur vech en eur c'harter eleac'h ma zoa clenvet etouez ar chatal. Bet oa, credabl, tost da loenet crog ar c'hlenvet enho. Pa zigouezas er guær e chomas clan he unan. Goude beza bet eun nebeut dervezioù var he vele, e velleas dezhan, e savaz, e viscaz adarre an dillad a ioa bet gantha en he vech hag ez eas vardro loenet he dad. Abenn antronoz ar c'hlenvet a voa crog e loenet he dad, hag ac'hano en em skignaz er c'harter-ze eleac'h n'oa hano ebet anezhan bete neuze.

An daou-ejen lard prenet er bloa-ma e Pariz, evit morlarjez, a boueze ar c'henta anezho, eun-ejen c'huec'h vloas, tri mil cant lur; an eil, eun-ejen pevar bloas, daou vil nao c'hant daouguent lur. Ar chatal, a leverer, a ia mad avoalc'h varnezho. G. M.

LAVARON AR RE GOZ.

An dour a red
Ne ra droug da zen ebet.

An tamm hag al lomm
A zalc'h an den en he blomm

Al lomm eb an tamm
A ra d'an den kaout lamm;

An tamm eb al lomm
A zo war galon an den evel plomm.

J. C. K.

FEIZ AN EDE.

KEMPER. — 2 Meurs.		PONT-NABAT — 28 C'hue.	
Priz ar c'hant tiour.		Priz ar c'hant tiour.	
Guinis....	15 lur, 20 c.	Guinis....	15 lur, 24 c.
Segal....	8 lur, 84 c.	Segal....	9 lur, 90 c.
Eiz.....	« lur, « c.	Eiz.....	9 lur, 75 c.
Ed-du....	7 lur, 40 c.	Ed-du....	6 lur, 88 c.
Kerc'h....	9 lur, 43 c.	Kerc'h....	9 lur, 38 c.
Avalou-douar	4 lur, 25 c.	Avalou-douar	4 lur, 25 c.
MONTROULEZ. — 23 c'huev.		BREST. — 25 C'huevrer.	
Priz an hectolitr.		Priz an hectolitr.	
Guinis....	24 lur, c.	Guinis....	24 lur, 12 c.
Segal....	« lur, « c.	Segal....	« lur, « c.
Eiz.....	42 lur, 23 c.	Eiz.....	43 lur, 38 c.
Ed-du....	43 lur, 74 c.	Ed-du....	40 lur, 74 c.
Kerc'h....	9 lur, 35 c.	Kerc'h....	40 lur, 43 c.
Avalou-douar	8 lur, 50 c.	Avalou-douar	40 lur, 50 c.

Ar Gerant: AR. DE KERANGAL.

Kemper, moulet gant AR. DE KERANGAL, Moulter an Escepti.

FEIZ HA BREIZ,

KELLOU A BEP BRO, HA KENTELIOU VAR BEP TRA, DIGASSET BEP SUL

Da guement Christen a goms ar brezouneec.

Eun Abonnamant d'ar Gazeten à goust :
 Evit eur bloas..... DAOU SCOUET.
 Evit c'huec'h miz..... EUR SCOUET.
 Evit c'huec'h real..... C'HUEC'H REAL.
 Eur gazetenn ebken..... DAOU VENNEC.
 Abonnamant a dle beza great araog caout ar gazetenn.

ALIOU.
 Ar scrijoun a ve c'hoant da lacat er gazetenn a dleer da adressi oll d'an Aotrou MORVAN, Beleg e Kemper.
 Ar paemanchou a dleer da adressi d'an Aotrou SALAUN, ebken. An abonnamant a guemerer e ti an Aotrou SALAUN, librer, ru Kereon, e Kemper.

KEMPER, 16 Meurs 1867.

Eun madober great mad, a leverer, a dal an anter hirroc'h, lavaret a eller kercouls : eur madober great fallacoll an anter euz he dalyoudeguez. Bez' ez eus tud var an douar hag a ra cals vad, mes n'her greont ket eun dour evit Doue, hen ober a reont evel dre voazamant, evel vadellez hag a deu euz an den epken. Evelse, an aluzen ha kementse dre ma o dens calon vad, ma o douz rez da rei, ha ma na ellont ket imtal dagaout tuez oc'h ar paour a velont goloet a dro d'ho hag o c'houzaon a bep seurt dienez. Hoguen sclerijenn ar foiz ne deu ket da ziskuez dezho er paour skeuden Jesus-Christ ha da zavel ho aluzen bete Doue, hag e reont ar vad kentoc'h evit ober plijadur dezho ho unan, eguet evit tenna a boan unan, a vempron Josus-Christ. Setu petra zigoueze gant eun itron pinvidig divar henn pelhini e lennen n'eus ket pell ar pez zo ama varlerc'h.

coude ma carfac'h renta din eun tamig servich, e rafac'h eur vad vraz evidon. Ar pez a c'houlenan diganeoc'h eo, en eur dremen, rei ar pezig arc'hant-ma d'ar paour dall a velit duhont e corn an dachen. Kementse n'ho taleo ket cals, rag guelet a ran oc'h eus divesker cals guelloc'h evit va re-me.

— Evit an dra-ze a rin avoalc'h, eme ar potrig; hag hen o kemeret an aluzen euz a zorn an itron, hag en eur pennad red, e daou pe dri lam e voa digouezet e kichen ar paour dall. Hoguen digouezet beteg ar paour, eleac'h teleur ar pezig arc'hant dezhan divar fae, ar potrig a ziviscas e damig tog, hag a lakeaz an aluzen e cocoen an dall en eur he zaludi evel m'en divije great da eun den a reng huel. Ne zonzje ket, ar potrig mad, e c'houenze eun ene da Zoue o rei an aluzen-ze en eun doare ker brao; gouscoude en doa great.

An itron a voa hé lagad o para varnezhan, ha pa her guelaz o rei he aluzen en eun doare ker carantezuz e voue scoet en he c'halon. Sonch a deuas dezhi euz ar pez e doa clevet meur a vech : An doare da rei a dal hirroc'h evit ar pez a roer; ha muioc'h c'hoaz euz a guement ma: an hini a ro d'ar paour a ro da Jesus-Christ; en eur guer, ar Feiz a deuas da sclerijenna he ene. Divar neuze e creascaz he aluzennou, hag e cave dezhi guellet Jesus-Christ er paour da behini e roe. Ne jomas ket eno. Sclereat var guementse e savas c'hoaz hueloc'h. Dont a reas da voaza da ober dre feiz, evit Doue, kement a rea; hag evelse e renaz ep dale eur vuez leun a zantelez, eleac'h diraraog, evithi da ober meur a vad ne zave ket he zonzh hueloc'h evit guizioù ha boazamanchou ar bed.

Meur a hini a gafet evelse hag a goll ar frouez euz ar vad a reont dre n'her greont ket evit Doue.

Doue a deu bep én amzer da ziskuez sclerijenn d'an dud difeiz en em guemer oc'h ar c'hroazioù pe oüs skeudennou ar zant. Ho skei a ra en hevelep doare

Ne voa ket bet pell eno na dremenaz ebioù dezhi eur potrig dog pe unneg vloaz hag a iea d'ar red, ar c'huezen var he dal ha berr he alan. Eur scolaer oa, eul levrig bennag gantha dindan he gazel, hag en em gave divezad. An itron a grogaz en he vrac'h pa edo o tremen, hag a lavaras dezhan :
 — Va buguel, prez zo varnoc'h var a velan; gous-

ma zeo red dezho anzao eo he zorn en deuz ho scoet.

Eur beleg euz an Autrich hag a voa oc'h heul an arme, o veza eat da velet ar re glan en eun hospital e kær Trautenau, a gavaz eno etouez eun niver braz a dud gouliet ha mac haniet, eur zoudart eus ar Prus hag en doa collet he ziou vreacl' er stourmat diveza ma voa en em em gavet enlia. O velet ar stad truezuz e pehini e voa an den reuzeudig-ze, ar beleg en em lakeas da goms brao outhan, d'he zouguen d'ar fizians e Doue, ha d'ar zentidiguez oc'h he volontez santel. O clevet ar c'homzou-ze, ar zoudart a zavaz en he gouarez en he vele hag a lavaras d'ar beleg: « Dereat eo e sentien oc'h bolontez Doue, rag an dra-ma so eur bannion leal euz eun torfet am eus great. E miz even, pa zeaz hon arme var douarou an Autrich, e caviz eno eur groaz, ha skeuden Hor Zalver stag outhi. Tenna a ris va zabren hag e tronc'his he ziou vreacl' d'ar Christ. Ha setu Doue so talvezet dezhan e vije distaguet ive va diou vreacl' diouzin. Esperans am euz em bezo ar pardon eus va zorfet pa zoun scoet ama. »

Ar zoudart-ze, evel a velit, a voa dihonet ar feiz en he galon, hag en doa digoret he zaoulagad.

An taol-ze a elie servichout da skuier d'an dud dizoue, a ve divorc'het avoalc'h evit en em guemeret oc'h an traou sacr. Ar peza voa digouezet gant ar zoudart-ze so bet digouezet c'hoaz ouспен eur vech, ha zoken en hor bro Breiz-Izel.

ANNECY. — Eur Zaoz, oajet a eis vloas varauguent, en deus kuiteat he fals religion evit kemeret ar guir religion heuliet gwech all gant he dadou coz. Baderzet eo bet ha recevet en deuz he Zalver er memes dervez. Eur buguel tri bloaz en deuz, hag en deus great al le ha lakel dre scrit e felle dezhan sevel ha kelen ar c'hrouadur-ze er guir feiz. An den-ze so eus eul lignez euz ar re guenta a Vro-Zaoz: euz a c'hoad ar rouanet eo. O tont d'en em lacat e reng bugale Doue, etouez breudeur Jesus-Christ, en em gavo en eul lignez c'hoas noploc'h hag huiloc'h.

Rom. — Ar c'hazetennoù so ato leun eus a hanoion ar re a ja da Rom d'en em lacat e servich ar Pap, pe a ro arc'hant evit lacat re all en ho leac'h pa na ellont ket mont ho unan. Ar fizians a zo e santelez Pii Nao a ra da galz a dud goulen burzudou digan-tha. Eur plac'h iaouane, elan pell zo, a gas pemp cant lur evit paca eur zoudart, hag a c'houlen ar ie-c'het. C'hoant e deus da gaout eun tam euz a zoudanen ar Pap. Cridi a ra, evel ar c'hreg ma comz an Aviel anezhi, e vezo pare mar guell touch oc'h eun tam dillad hag a vezo bet douguet gant Vikel Jesus-Christ.

E Napl hag er c'harteriou divar dro em a c'hollera, hoguen he ma ket e Rom nag e stajou hon Tad Santel ar Pap. Var guementse eur medesin a Napl a

lavare. Eur burzud eo ne grogfe ket ar c'hlenvet e douarou an Tad Santel, hag lien oc'h ober distruch er c'harteriou pro var dro. An oll zo souezet gant kementse. An dud difeiz a zo conmparet, hag o deus great, hag e reont ato, ho gallout o, clasc digas, ar c'hollera da Rom.

Ar c'hazetennoù a goms cals brema euz al laeron ilizou. Dalc'h mad e clevet hano euz eun ilis bennag laeret e Frans. Peur tiessa, sionas, al laeron en em guemer oc'h an tabernacl hag a zoug ho daouarn sacri-lach var ar zacamant santel. N'eus ket pell e comzet euz eul laeronse evelse great en eun ilis a Lyon: hirio e comzer euz eun all great en eun ilis e kær Castelnudary.

An trezeg a vis c'hevruer, da bardaez, eur vaouez bet o pidi, a velaz, pa edo o tont er meaz euz an iliz, eun den hag en devoa eur varo hir ha divalo, daoulagad skeulf en he benn, hevel mad oc'h eul laer; he vele a reaz o vont evel dre guz a hed moguer an iliz. Hoguen teval oa dija, ha n'her guelas nemet en eur dremen. Evel ne vouie petra da zoujal ne lavaras guer hag en em dennas d'he zi. Hoguen credabl eo e voa an den-ze al laer pe unan euz al laeron a elie ober an torfet.

Antronoz, da c'huic'h heur, unan euz ar veleien a lavare an oferent. Bez' e zoa cals tud en oferent, ha da vare ar gommunion e sonjas digueri an tabernacl evit communia ar gristenien a dostea oc'h an Daol Santel. Pebez enerez en devoue pa velaz an hostiou sacr a stlabez en tabernacl hag ar vesseliou sacr laeret! Chom a reaz eur pennad mantret, araog caout ners avoalc'h da lavaret d'an dud fidel a ioa eno petra voa c'hoarvezet. Oll dud vad Castelnudary so bet meur a zervez er glac'har hag en daelou o pidi, stouet var an douar, dirag an aoter-ze cleac'h ma voa bet great an torfet. Ouspen-ze e rejont eur gwest etrezho evit sevel arc'hant da gaout vesseliou sacr-all, ha savet o deus peadra da brena re all caeroc'h evit ar re so bet laeret. Dre urs an escop ar zacamant so bet exposet, hag ar parroziou-all a guear so deut d'an iliz-ze e procession evit ober amand honorabl d'hor Zalver evit an dismegans great dezhan er zacamant euz he garantez. An escop he unan a deuas d'an ilis, hag eur brezeguen gaer a voue great hag a dennas daelou euz a zaoulagad an oll.

Setu ama c'hoaz eun iliz-all bet tost dezhi beza laeret. Eun nosvez e voue guclet eur selerijen vraz en ilis Sant Jorj, e Lion. Dioc'h tu e voue sonjet edo an tan goall en ilis. En em zestum a reas tud; an iliz a voue digoret, ha souezet braz e voue an oll o velet an tan er c'hestiou staguet oc'h lod euz ar pillerou evit receo ofransou an dud vad. En em lacat a rejor da glasc piz hag e voue clevet al laer souc'het en eur c'horn tro. Al laer-ze en doa lakel en he benn caout an arc'hant a voa er c'hestiou, hag cleac'h kemeret kizellou pe ben-viachou all evit ho digueri pe ho zerrri, en doa sonjet lacat an tan enho. Lakel en doa outho da guenta eol ha traou all a grog an tan enho buan, hag evelse ho deve ep poan. Hoguen an tan a rea ive selerijen, ha

setu ar peza hon distubias Dioc'h eun tu bennag e vezer her ato. G. M.

Ar vech on eus lavaret o devoa hirio ar gristenien vad ar rebevar e horn ar hed kement a fizians e santelez Pii Nao, ma claskent oll caout eun tam dillad bennag bet douguet gantha, pe eun dra all bennag oüs pehini n'ed vije bet touchet, hag e credent eo da veritou pe da abardonni an Tad Santel e voant didouman euz a veur a rehras an ellet, da hevel burzudas bet diaf re o doa fizians enha hag a lakea da douch outho an tamou dillad-ze. Cals tud elan dreist oll so bet pareet evelse oia gredet eo voa pare obet evitho. E Kemper ive euz digouezet ar sizun-ma eun dra en doare-ze.

Eun dimezel a voa eat bete'r mouch gant eur gor, pe ma leun, gant an humorieu, an dourennoù fall en em zezstimentoll en eul leac'h. Ar medecin a vezo var he lizo, eun den gouezieg a dra zur, en doa great kement a fell ar medecin ar da ober evit pare an hevelep gorion. An den soellet en doa he boan, hag e fin ar sizun all, an d'ar gouezia voa eat ker fall ma n'en doa mui ar medecin esperet ebet d'he zavetei. Gouscoude dillan ha d'ar gant an bini glan en em gavas guelloc'h. Dimezel ar medecin a voa clevet Kempere, unan euz ar vikelet ar medecin hag a c'houlennaz ar medecin hag a c'hoarvezet an dimezel ma comzomp an dimezel ma lavare n'oa ket, her pedas da velet an dimezel dioc'h tu.

« Petra rin-me o vont di, eme ar medecin? Eno an deus ma hebra da ober; ha me am eus prez, tud elan d'ar da velet. Ar vikel vraz a reas kement ma zeas d'he lizo an dimezel a ra var dor ar gampr hag eo bet dimezel he unan a den da zigueri. Pare oa. Ar medecin e c'hellit eridi, a voue souezet. « Ma bez' e voa euz eur burzud? Ar medecin n'en deus lavaret hag a na han, ha ne ket deomp ni eo an dimezel he unan a den da zigueri. « An dimezel a vad a gred ferm, eo da Bii Nao eo cleac'h euz ar bec'had. Gallet e doa caout eur galoten bet zoa ar lag e doa touchet ar galoten-ze oc'h al leac'h an dimezel he poan. Ar boan a voa eat kuit, hag an dimezel a deus douget ebet na deo pareet dre veritou ha pedomp an Tad Santel. G. M.

EUR GOUEL BRAZ

Er gueur a Amiens, en enor d'an Aotrou'n Escop DAVELUY, Escop Ancon, merzeriet da Vener-ar-Groaz an 30 a viz meurs 1866.

Calvez al ha helfe guel egued omp lavaret ar peza zo ampet er gueur a Amiens, an 28 a viz c'houerver diveza Couzcoude o veza ma hon euz bed an eurvad da velet gant hon daoulagad ar peza zo bet great, ha da glevet gant hon diou scuarn ar peza zo bet lavaret en deiz braz-se, he credomp ober plijadur d'ar gristenien fidel a Vreiz-Izel, hag ispisial da guenvreu-

deur Breuriez ar Feiz, en eur scriva dezho ar peza so ama varlerc'h.

An Aotrou Anton Daveluy a oa gant er gueur a Amiens. Goude beza great he studi ha beza bet beleguet, e oue eur pennad amzer vikel en eur barrez e kichen Amiens. Ac'hano ez cas da zeminer ar Missionnou hanvet a Zianveaz-Bro, e Paris, evid en em zoarea da vont da brezeg an Aviel d'ar broiou infidel. Pa en deoue peur achuet he zeminer en ti santel-ze e oue gavet da vont da vission Coree.

N'hellomp ket conta hirio he vuez pen-dre-ben. N'hen anavezomp ket e hoaz mad avoalc'h evit kementse. Divezatoc'h he c'hellomp, rac he vreur hen deuz prometet digas d'omp buez ar merzer pa vezo bet scrivet ha moulet. Neuze e lekeitap ar vuez duduz-se e Lizeriou Breuriez ar Feiz. Hirio n'hellomp coms nemet divar ben ar gouel braz great en he euor, an 28 a viz c'houerver, er gueur a Amiens.

Aotrou'n Escop Amiens en doa scrivet d'eun niver braz a Eskibien hag a Veleien da zont d'ar gouel. Holl n'ho deuz ket gallet dont. Couzcoude, hervez ar peza grede au holl e Amiens, var dro 700 belec, 100 Chalouni, pevar Pro-Naoter abostolic, 12 Escop, 4 Arc'hescop ha 2 Cardinal a zo en em gavet unanet evid ar gouel.

An amzer, fal araoz, ker fal pe falloc'h goude, a zo bed en deiz-se caer meurbet. An euz a oa a du gand an iliz ha gand ar feiz evit trugarecaat an Aotrou Doue euz ar c'hraz presiu great d'an aotrou'n Escop Daveluy, hag ober euz an deiz-se eun deiz luguernuz meurbet. Ar gonel a zo bet eur gouel berz evid ar gueur a Amiens. Den ne labour, ar staljou a zo bet serret epad ma zeo padet an oliz, tapissou euz ar re gaera, lisseliou seiz pe gloan ha taolounou sent a oa stignet euz an tiez er ruion ma lie tremen ar brosession. Hed-a-hed d'ar ruion-ze en daou gostez e oa plantet guernennou ivet e bec pere e n'ue gand an avel banielou ha scrivet var-uezh eur guer bennac tennet euz ar scritur sacr, en enor d'ar verzerien. Dirac ti an aotrou Daveluy e oa savet eur volz a enor goarnisset a zeiz ru evel he voad scuillet evid ar feiz, ha var ar volz-se e lennet hano ar merzer ha comzou tennet euz ar scritur, dre bere he dad hag he vam, he vreur, hag he c'hoarezet a drugarecae Doue euz ar c'hraz great d'ar merzer.

Sant-Leu a oa an iliz merket evit deraoui ar brosession. En iliz-se eo en doa an Aotrou Daveluy lavaret he oferent guenta: evel se ive iliz Sant-Leu a oa fichet gand eur gaerentez en tu-al d'ar peza a helfemp da lavaret. An aoter vraz hag an aoteriou-al a oa goloet a fleur hag a zierjennou var alum. Adreg an aoter vraz e oa stignet eun tapiz seiz var behini e oa scrivet e lizerennou aour ar c'homzou-ma e latin: D'an Aotrou reveran meurbed, Anton DAVELUY, pehini en deuz lavaret he oferent guenta en iliz-ma, er bloavez 1841, an 29 a viz kerzu.

An holl billerou euz a iliz Sant-Leu a zougue ive

pout, mez talfaserien, ginaoneien, panezciea...! Ah! homa eo an amzer!

Meur a vech, o clevet caosiou ken druz, Lan an Dall en d'euz bet scrabet he beun, daoust ma'zeo dilaou, credit eryad, en d'euz bet c'hoant da ziscouez he flem, da zével he zorn, evit... ar pez a ouzoc'h. Mez danjeruz eo evit couer clask affer oc'h paotred kear: furroc'h, furroc'h eo tevel, hag ho lezel da chaokat en ho diviz. Muoc'h a boan a ra da Lan an Dall clevet da zul, hag avechou var ar sizun, eun darn dielen euz he anaondegez, euz he barrez, o lavaret evel glabouserien kear, o veuli bepred evel d'ho an amzer brema, an traou brema, an dud brema, hag o tispenn dalc'h mad kement so bet en amzer guechall. Evit gnr, ne ket ar guella labourerien nemeur eo a gaoze ec'hiz aotrouien kear, mez eun darn laboused treud a ve iac'huz ha talvouduz evit-ho sevel abretoc'h euz ho guele, mond stancoc'h var dro ho farketer, e'houenna pisoc'h ho douaron, trempa d'rusoc'h ho zachennou, ha tremen nebeutoc'h a amzer en hostaleriou, dere'heil closoc'h var ho godel paz eont d'ar bourg, d'ar marc'had... Nan, ne blij ket din al faou guelet couer o trei evelse da voure'hiz, o cana ker stank soniou kear var ar meaz. Ne ket gouscoude m'am be c'hoant ebed da lavaret nep droug euz ar voure'hisien, da zisprizoud ann dud a vez ken honest, ker seven, a oar prezeg ker brao, dioc'h ma c'houlenn ho godel, a den ker coant ho zok da lann, da Laou, a c'hoarz oc'h Caour, oc'h Fin ken tener ha peb Fanch oc'h he Gatell. Nan, nan... Evelato, me gav dizoare, petra dell deoc'h? eun turier douar a ra lae var he vreudeur labourerien, ha ne vel tra vad nemet e kear. Kea eta da voure'hiz, mar d'eo da ioul, va c'hamarad, ha na zoug ket evelse a zeou dorn manget eun Aotrou, a gleiz craban groz eur mansoner; cred, mar kerez, ne ma ket var ar meaz kement tam pri, kement louzaouen fall a zo er bed.

Evidoun-me, Lan an Dall, me zonz hag a lavar evelhen: Mar d'euz brema tud a skiant, sperejou dibar, daoulagad lem a vel couiz en noz evel en deiz, eleac'h dispri-zoud ar re ho d'euz bevet en ho raok, kement den coz a zo c'hoaz var an douar, an dud-se, ker brao lodet, a dlefe trugarcat an Aotrou Doue da veza roet dezo eun argou-lou ker pinvidik, hag ober nebeutoc'h a drouz gant ar pez a ouzont, pe a gav dezo gouzoud. Var ho lerc'h, en ho goude marteze e tevio er bed tud all hag a rai caer-roc'h traou c'hoaz evitho, a rai tan ep maged, tan ep keunent, a vevo hep debri nag eva, a ielo da chom e bro al loar, e bro ar stered, abalamour m'a z'euz re a fank, re a c'hlaou, re a zour var an douar, a zilojo erouer ar bed euz he varadoz, hag a roio he dron d'an hini a c'hoanta he baka pell, pell zo... d'an hini a c'halvomp ni Paolik. Pe guir ez euz kement a her, kement a c'hal-loup gant an dud, n'euz ket da gridi e teufent da heana ken trum, euz an eil dervez d'egile: marc'h dirollet a ve danjer evithan da derri he c'houzoug, he zivesker, mar c'hoantafe chom a za crenn, en eun taol. Ha perak ive paouez pa'zeur ker brao en hent?

N'euz forz: daoust da oll spered an dud, daoust d'an

oll nevezientou a zo ker stank brema dre ar bed, ne gredan ket me, Lan an Dall, e ve brema ker brao, ker chentil, ken aviuz, ma ve red beza nos-deiz o skei var gein guechall, e ve leac'h da ziscar guechall hag e gallek, hag e saoz, hag e turk, hag e brezonck dreist oll, evit sevel, ha sevel atao brema bete barr an env, huelloc'h marteze evit an Aotrou Doue. Ni velo an dra-ze eun dro all.

LAN AN DALL.

Hano ar Zant evit ar Sizun-ma.

- DILLUN, 18 MEURS. — Sant Gabriel, Archael.
- DINEURS, 19. — Sant Joseph, pried ar Verc'hez Vari.
- DIMERC'HER, 20. — Sant Patris, Escop.
- DIZIQU, 21. — Sant Bencat, Abat.
- DISGUENER, 22. — Al liser gant pehini oue sebeliet hor Zalver.
- DISSADORN, 23. — Euz an deis.
- DISSUL, 24. — Trede sul euz ar C'horais.

An Abostol hirio:

Va breudeur, kemerit skuer var an Aotrou Doue evel mazoc'h he vugale mpia caret; ha dalc'hit da garet ho nessa evel ma en deus Jesus-Christ hor c'harel ha ma zeo en em roet evidomp oc'h en em guinnig da Zoue he dad evel eur victim pe eun hosti a c'huez mad.

Na ve ket hano en ho tonsz a liguentez, nag a netra control d'ar burele, nag a avarisdet; kementse ne zere ket oc'h christenien a dle beza sant; nag a gomzon louz, divalo, dihoel; an traou-ze ne zereont ket onzoc'h; ra viot clevet avad o renta grasou da Zoue. Rag gouezit ervad an dud lik, an dud divez, an dud avarisius (ar pez a so azeuli idolou, beza pain, n'o devezo perz ebet e rouantelez Jesus-Christ, e rouantelez Doue. N'ep em lezit ket da veza touellet gant comzou gucier; abalamour da ze eo e coez coler Doue var ar re ne gredont ket d'ar virionez. Na rit ket eta tam ebet evel d'ho.

Guech all ne voac'h nemet tenyalijen; brema ez oc'h sclerijen en hor Zalver Jesus-Christ. Balcit eta evel bugale a sclerijen. Ar frouez a zoug ar sclerijen ez eo pep madelez, pep lealdet, pep guirionez.

Lizer Sant Paul d'ar bopl a Efeez. V. I.

G. M.

Urson a drubuilhou kear.

Evel ma za en amzer-ma cals labourerien, cals micherourien d'en em deleur e kear, e ve mad dezo anaout da viana eul loden eus an drubuilhou so eno oc'h ho gortoz. Red eo caout eun tamig lojeis, eun tamig toul cambr bennag. Ne de ket epken an hini en deus greg ha bugale, mes zoken an hini n'eus nemethan he-unag a vez nec'het avoale'h o clasc eur plasic d'en em loja! Ha c'hoas goude beza cavet an tamig lojeis-se, nag a drubuilhou a gaver eno ha ne vije bet sonjet enho morse! Ama da viana e zan da goms eus a unan ha ne de bet deut nemeur e speret nicun eus ar re a ia da glasc lojeis e kear.

an... ha petra eo an drubuil-ze, a leverot? ... en em gaout daou eus ar memes hano da veza lojet er memes li. ... kementse so eun drubuil? ... kement va tennat scrii ha respontit goudeze. ... kementou bras ez euz tiez hag a zo aleiz a rumou ... tud hag a loj meur a viz, meur a vloas marteze er memes cor-ti ep en em anaout. En tiez-se peur-nessa ar perc hen a zalc'h eur porcher hag a zo carguet da ober kefridiou an ti ha d'he zroual ervez bolontez he vestri. Hoguen en unan euz an tiez bras-se ez oa n'eus ket pell e daou doullie cambr, daou vicherour eus ar memes hano, hag unan anezo en devoue aleis a drubuil-lou da c'houzaou dres abalamour ma tougue ar memes hano gant eguile.

Ar c'henta anezo a voa eur marichal, (eur goff) hag a labourer er govellou. Gounit caer a rea, mes dispign gant a rea ive, hag e tremen eno eur vuez gae hag a blijadur evel eun potr dizourci ma voa.

Eur marichal, eur vrec'h arc'hant labourer (Nemeur he c'houzoug a ve franc, tud tud) blead'ha ma'ha pemp guennec daou d'he c'houzoug ma'ha real pe zec.

Ar c'henta anezo a voa eur marichal, (eur goff) hag a labourer er govellou. Gounit caer a rea, mes dispign gant a rea ive, hag e tremen eno eur vuez gae hag a blijadur evel eun potr dizourci ma voa.

Ar c'henta anezo a voa eur marichal, (eur goff) hag a labourer er govellou. Gounit caer a rea, mes dispign gant a rea ive, hag e tremen eno eur vuez gae hag a blijadur evel eun potr dizourci ma voa.

Ar c'henta anezo a voa eur marichal, (eur goff) hag a labourer er govellou. Gounit caer a rea, mes dispign gant a rea ive, hag e tremen eno eur vuez gae hag a blijadur evel eun potr dizourci ma voa.

Ar c'henta anezo a voa eur marichal, (eur goff) hag a labourer er govellou. Gounit caer a rea, mes dispign gant a rea ive, hag e tremen eno eur vuez gae hag a blijadur evel eun potr dizourci ma voa.

Ar c'henta anezo a voa eur marichal, (eur goff) hag a labourer er govellou. Gounit caer a rea, mes dispign gant a rea ive, hag e tremen eno eur vuez gae hag a blijadur evel eun potr dizourci ma voa.

da c'huec'h heur nemet kart. Noel vian a zistroas losteg, Goulen a reaz oc'h ar porcher ha n'en doa ket guelet digas en ti eur pred bouet, hag eun nebeut boutailadou guin. « Eo, eme r porcher; da Noel vraz em euz ho c'hasset. Ne zonz ket din eun den fur evel d'oc'h-hu en divije laket digas ama traou evelse, eleac'h Noel vraz a deu camaradet gantha aliez aze da ober nosveziaden-nou. » Hag e guirionez en eur vont varlaez, ar c'halvez kez a glevas safar ha canaouen e cambr Noel vraz. Edo varlerc'h he goan, hag e voue red dezhan ha d'he vignonet tremen gant ho c'heusteuren bemdez.

Eun dervez Noel vraz o vont gant ar ru, tom d'he c'hinou ha re striz ar pave evithan, a zigouezaz eun aotrou gantha, hag e lavaras dezhan eur guer treus bennag. An aotrou a zonzas dioc'htu e vije mad dezhan rei eur guentel d'ar c'hanfart-ze. Abonez enclasc e teuas da c'houzout pe hano en doa ha peleac'h e chome. Cas a reas dezhan eur billet eleac'h ma verke oa izom eur micherour en eun ti e ru... evit dresa eun or ne brenne ket mad. Ar billet-ze a voue roet d'ar porcher, hag ar porcher ne vancas ket d'he rei da Noel vian kerkent ha ma teuz euz he zervez. Hiema ne c'houlenne ket guell evit caout evelse eur guenneg bennag da c'hounit goude ma veze echu he labour er pors. Setu hen o kemeret eur berveg bennag, hag o vont dioc'htu d'an ti merket var ar billet. Pa voa digouezet, pa en devoa lavaret he hano hag evit petra oa deut, e voue casset en eur porzig cloz adren an ti, hag eno daou bicol mevel, gant pep a bennat keunent en em lakeas da larda he gostou dezhan tu ha tu, ha ne eanjont ken na voa bronduet oli he izili. Neuze hen taoljont adarre var ar ru hag hen lesjont da vont kuit en eur lavaret dezhan mont eur vech all eunoc'h gant he hent ha dioual petra lavare d'ar re en em galje ganthan.

Eur pennad goude Noel vian a zonzas dimizi. Cavet en doa eur plac'h iaouane dioc'h he zoare, fur, eur gristenez vad, savet gant eun tad hag eur vam leun a feiz. Ar guerent a roe ho otre, ha great oa, evel a leverer, ar pod oll nemet an tachad plat. Gouscoude, araog mont larcoc'h, tud ar plac'h iaouane a zonzaz e vije mad dezho ober eun tamig enclasc evit gouzout pe seurt brud en devoa Noel vian. Rag evithan da blijont dezho, marteze n'oa ket ker fur e leac'h all evel ma zoa dirazho. Cas a rejont eta eun amezeguez dezho d'ar ru ma chome an den iaouane enhi, evit gouzout petra zonzet hag a lavaret eno anezhan. Houma eta a ieas d'ar staliou, hag e kement stal ma zea, pa lavare hano euz a Noel, e cleve dioc'h tu: Ah! Noel? oh ia, hennez so eur potr hag a ren eur vuez l.... Mad eo da brema; ma vije hen a vije mad ive da baea, ne vanke ken. Noel a dlie tamou mad a arc'hant e pep stal, e ti r butun, e ti ar c'hemenet, en hostaleriou, en hostaleriou dreist oll. En eur guer, an amezeguez a vouezaz ep dale e voa Noel beuzet en he zle, hag e rene eur vuez kon dizuch hag ar falla liki-zien euz a gear. Cridi a reaz e doa clevet avoale'h, hag hi d'ar gear da renta cont euz he c'hefridi, Antronoz, na petra-ta, Noel vian en devoue he zac'h hed he guen.

N'em eus ket izom da lavaret eo Noel vraz en doa an dle hag ar goal vrud-ze en amezguez. Noel vian a veve didrouz ha dizispign, evel ma on euz be-lavaret, ha ne voa anavezet gant marc'hadour ebet, nebeutoc'h e hoas gant an hostizien.

Meur a zarvont all a zigouezas c'hoas gant Noel vian dre'n abeg d'he hano; mes re-hir e ve ho merca-oll. Aliez e teue marc'hadourien d'he gambr da c'houlen arc'hant outhan, hag en deveze mil boar o rei dezho da gridi ne ket hen eo a dlie dezho. Ar porcher, ato den a speret, ne vanke cazi morse da gas da Noel vraz al liziri ha traou all a voa evit Noel vian, hag-hema ne alie ket ato caout goudeze ar pez a voa dezhan. Meur a vec'h e voue dare-dezhan beza lazete pe goal lakeat, en he gambr zoken, gant tud bet hiskinet gant Noel vraz hag a deue d'an ti da glasc ho enebour.

Hoguen an dro a reas mui a poan dezhan, oue houma. He vam a glavas. C'hoant braz e devoa da velet he map araog mervel, hag e lakeas scrifa dezhan. Ar porcher, evel ne fazie morse, a gassaz al lizer da Noel vras. Hema hen digoraz, ha pa velaz hano a vam hag a glenvet, ne brijas ket he lenn hed-a-hed hag he lakeaz en he c'hodel. Noel vian a voa maro he vam araog ma vouezaz e voa clan. Kementse a rannaz he galon, dreist oll pa glevas pegucment a nec'h e devoa ar vam vad-ze en he amzer diveza abalamour n'oa ket deut he map var he zro, gant an aoun e devoa n'en divije collet he feiz hag he relijion e-ker. Neuze Noel vian ne varc'hatas mui. Mont a reas da jom etouez he dud, hag abaoue e vez bemdez o calveziat var ar meaz.

Ahanta, lenner, caout a ra deoc'h ez eo eun drubuil ar pez ma em eus comzet anezhan? Hoguen mar deo trubuiluz eun dra ken dister, petra da zonjal euz a guen aliez a ziazamant all a stoum oc'h ar re a ia da jom er c'heriou? Eur micherour divar ar meaz mar da e-ker ne oufe nemet beza diaz. Mar fell dezhan chom fur e vezo red dezhan pellaat dioc'h ar vicherourien difeiz, hag en devezo cals da c'houzaon euz ho fers; mar da d'ho heul, e tigezo goassoc'h e hoas gantha, rag coeza a rai en dizurs, hag e collo he feiz hag he ene. G. M.

KELEIER.

An Aotrou Breton, person Botmeur, so maro er sizun dremenet.

Au Aotrou Fave, belc Poul-ar-Bachet, e kichen Brest, so maro ive en derveziou-man.

Hon Tad Santel ar Pap en deus hanvet pevarzeg escop evit an Itali, etonez pere en em gaf escop Turin. Chom a ra c'hoas gouscoude calz escoptiou ep eskibien.

E Kemper, ar rodadegou-kezeg a vezo er bloa-ma d'an deis diveza a viz even ha d'an deis kenta a viz gouere.

An eil dervez euz ar mis ma e rea erc'h e Marsail,

hag oa guenn-cann ar meneziou divardro. Ama ive e rea erc'h an eiz euz ar miz; hoguen an erc'h so troet buan e glao.

Bep bloaz mascaradennou Morlarjez a vez penn-abeg euz eun daryout bennag. Evelse er bloa-ma adarre eur c'harroz a voa o tiskan da C'harroz Brest; al loen a voue spontet gant ar mascaradennou. An hini a voa er c'harroz a voue stlapet d'an douar; hoguen n'en devone nemeur a zroug. Mes larcoc'h eur vaouez a voue goal lakeat, hag eur huguel a voue discaret hag a icaz eur rod dreizhan. Al loen spontet a icas d'en em deleur en douvez eleac'h ma en em lazaz o coeza.

An Aotrou Tritschler so hanvet *conseiller general* evit an trede canton a Vrest.

Ar c'hlenvet a ioa goal groguet e Sant Briec hag er parrezion tro var dro, a so eat kuit couls lavaret, ervez cazetennou Costez-an-Nord.

Er sizun dremenet eo guelleat adarre var an ed. Goude gouren eur pennad, goude beza bet lam eur sizunvez bennag, ar goerzerien o deuz adarre ar gounit var ar brenerien. — Al loenet lard a zo ker, hag evel a lavar ar c'hazetennou a gomz euz an traou-ze; credabl eo e keraint c'hoaz, e teuint da veza ker bras, kement all a dud evel a vezo er bloa-ma da vaga e Frans; kement all a dud a denio ama euz ar broiou all evit an *exposition*!

Epad ma voulet ar gazetennou, eo deut da Guemper ar c'helou euz a varo an Aotrou Kermel, person ar C'hastel-Nevez.

Eur vatez euz a guichen ker Sant-Stefan (Saint-Etienne) e devoa destumet eun nebeut arc'hant etouez mitizien all evel di, hag e deus ho c'hasset da Rom gant eul lizer cleac'h ma ped an Tad Santel ar Pap d'ho c'hemeret evit eun testeni euz ho c'harantez evit han. Pii Nao en deus scrifet he unan ar c'homzou-ma da gass d'ar vatez-ze. Comzou ar Pap so e latin hag ho zroan ama e brezonec:

« Doue r'ho pennigo, ha ra vezo bepret var ho mu-zellou hag en ho calon, er vuez, er maro hag epad « an eternite. »

PRIZ AN EIB.

KEMPER. — 9 Meurs.		PONT'NABAT — 7 Meurs.	
<i>Priz ar c'hant liour.</i>		<i>Priz ar c'hant liour.</i>	
Guinis....	45 lur, « c.	Guinis....	45 lur, 20 c.
Segal.....	9 lur, 46 c.	Segal.....	9 lur, 50 c.
Eiz.....	« lur, « c.	Eiz.....	9 lur, 25 c.
Ed-du....	6 lur, 94 c.	Ed-du....	7 lur, 60 c.
Kerc'h....	9 lur, 46 c.	Kerc'h....	9 lur, 43 c.
Avalou-douar	4 lur, 25 c.	Avalou-douar	4 lur, 25 c.

Ar Gerant: An. DE KERANGAL.

Kemper, moulet gant Ar. DE KERANGAL, Moulet an Escopti.

FEIZ HA BREIZ,

KELEIER. Bep Bro, Ha Kentelioù Var Bep Tra.

DIGASSET BEP SUL

Da guement Christen a goms ar brezonec.

Un Abonnamant d'ar Gazeten a goust:

Evit eun bloaz.....	DAOU SCOUEZ.
Evit c'huoc'h miz.....	EUR SCOUEZ.
Evit tri miz.....	C'HUEC'H REAL.
Evit ar gazetennou ebken.....	DAOU VENNEC.

Abonnamant a dle beza great araog caout ar gazetennou.

ALIOU.

Ar scrijoun a ve c'hoant da lacat er gazetennou a dleer da adressi oll d'an Aotrou MORVAN, Beleg e Kemper.

Ar paeamanchou a dleer da adressi d'an Aotrou SALAUN, ebken. An abonnamant a guemeret e ti an Aotrou SALAUN, librer, ru Kereon, e Kemper.

KEMPER, 23 Meurs 1867.

Da goms divarbenn dizurziou ha follenteziou an amzer ened, euz d'he lavaret en dez-all: perag, emezhan, epad ma em a darnvuia o kemeret ho ebatou, evel he frouden, e veler tiez, hanvet hospitalion, euz ma zeus muioc'h a hrez evit ar c'hustum? Perag e veler en tiez-ze muioc'h a zervicherien o labourat evit er mare all? Da biou ar gueleou-ze a aozont, an oll-bourchas-ze a reont? Da biou? Da dud ha ne zont nemur e clevet epad ma labour re all evitho. D'adud hag a zo brema oc'h ebatou, hag a vezo eber pe vare hoas clan, mac haniet, ep eun tam bara da zibri manteze. Da dud hag a ra brema dismegans d'ar relijion hag a gavo gras ebet caout ar memes relijion da asten dezho eun den madelezus pe e chomfent da vervel e oin eur m' bennag goude m'o devezo collet ho ners hag ho lec'h dre ho follenteziou.

Perag, e staliou so, e clever trouz an esken, trouz ar mozel, ez eus micherourien, cals muioc'h a brez var-hezho evit ar c'hustum, oc'h ober, gant plench sabr tamougiou ire hier hag a c'halver archedou? Perag, e parkerien-ze pere a hanver berejou, e veler muioc'h a dud evit er mareou-all o toulla an douar, oc'h ober euz ar fessier-ze pere a c'halver beziou? Perag? Gortozit hag e velot, abenn ma vezo echu follenteziou an amzer ened: an archedou, ar beziou-ze o devezo cavet perc'hen. Evit derveziou ma en em ro evelse an dud a brez d'an dizurs, an maro ive a hast afo. An ankou a zao he falc'h, hag a sco didruet e creiz ar bandennou tud-ze a ve lavaret a ve eat er meaz anezho ho unan o clase ho fijadur, hag a bac aliez euz ho buez eur pennad dervez pe eur pennad nosvez a follentez. Evelse, etouez calz a re all, ar c'hazetennou a gomz euz eun demezel iaouane, pinvidig, a liguez huel, so maro trum en deziou ened couls lavaret divar greiz ebatou. Goude beza danset ha lamet he goalc'h bete teir heur dioc'h ar mintin en unan euz an ebatou noz-ze a c'halver bal, setu hi en eun taol o

coeza clan, hag o vizeallioù ar maro. Casset e voue da azeza; goudeze e voue douguet d'he c'harroz evit he c'has d'he zro. Eur vecher e c'harroz ne lavaras mui gwer ebet, ha pa zebot d'he zenna ac'hano ne voue tennet nemet eur c'horf maro!

Setu petra goust da veur a hini follenteziou an bed. Ha pa n'en defe ket eta eun den a feiz, ha pa n'ar rafe fers nag a Zoue, nag a relijion, nag a bec'het, ma selle epken oc'h buez he gorf, oc'h he iec'h et, e ve a vualc'h kementse dezhan evit cassat an ebatou-ze, an dizurziou-ze pere a laz muioc'h a dud evit n'evit euz ar c'hlenvejou-ze rag pere gouscoude ez eus kement a zrouz.

Ma na gaver ket ar follenteziou-ze var an ebatou, e gaver ive re all. Eno ive e clevet a vechou ar lec'h hag a vuez dre eur follentez bennag. Oc'h unan hag a zestom he varo dioc'h he labourou tem, gousket oc'h ober re, e cafot deg ha n'o deus ken maro nemet dioc'h ar fonkerer pe eun dizurz all bennag, dioc'h eur follentez bennag great en derveziou-ze a roer d'an ebatou pe da hec'h ma guiziou fall ar bed.

Eur scrij eo sonjal pe guen izel e coez an dud n'o deus na feiz na relijion, pe guer criz, pe guer calet e teu da veza eur galon e peluni n'en deus Doue perc' ebet. Lavaret a rafet e ve an dud-ze corf hag ene etre daouarn an droug-speret, hag ho ren evel ma car.

Setu ama eun den iaouane naonteg vloaz, condanpet d'ar maro, abalamour ma en deuz lazete eun den, ha ne fell ket dezhan clevet han'o Zoue nag a velego hag a bardon, nag a ifern. En em fougueal a ra euz he dorfet; n'en deus keuz nemet da eun dra, defot n'en deus gallet laza tri all c'hoaz araog ma vije croguet en ha. N'en deuz aoun ebet rag ar maro, ha ne fell ket dezhan zoken e ve lezet he vuez gantha. En eur guer lavaret a ve great eo an droug speret a goms dre he c'binou pa lavar eur guer bennag. Hag e guirionez evit chom en eur galetter a galon evelse eo red a dra zur beza poultzet gant an diaoul pe beza collet oll he skiant.

« Piou en divije credet e vije, epad ken aliez a gant vloaz, en em viret e cuz oberou ar feiz er Japon, er vro-baien-ze, e touez ar baienet-ze ker braz enebourien d'ar feiz ma na lezent den da dostaat oc'h ho adjou nemet bressa a raje ar groas? Mes ar pez a fell da Zoue a ia da benn. Kement a zigoez a so etre he zaouarn, hag ho ren evel ma car. Var ar groas e voue scrifet ar pevar guer-ma : *Jesus Nazaranus Rex Judaeorum*. Jesus a Nazareth, roue ar Iuzevien. Prinset ar veleien, ar Scribet hag ar Pharizianet a bedas Pilat d'ho lamet ha da lacat en ho leac'h oa Jesus en doa lavaret oa roue ar Iuzevien. Petra lavaras Pilat? *Ar pez zo scrifet, so scrifet*. Evel pa lavarje, eme eun Tad euz an iliz : ar pez en deus lavaret Doue, so lavaret, hag he gomzon ne dremenont morse. Hag ar pez zo digouezet var ar C'halvar, her guelomp ive er pez a zigouez ganeomp, rag Jesus a Nazareth en doa lavaret ive ; *va rouantelez ne deo ket euz ar bed-ma* ; da lavaret eo, n'en doa ket bet he rouantelez digant an dud, mes digant he Dad eternal. Hen eo eta roue Jeruzalem, roue Rom ha roue ar bed ; bez' ez eo bet hag e vezo ato bete fin ar bed.

« Ah! en em erbedomp oc'h ar verzerien-ma, evit ma raint deomp caout an ners calon a behini on euz izom en amzeriou-ma, ama hag e leac'h all. Trugare-keomp Doue dre ma kendalc'h en eun doare burzuduz an unvaniez etouez an Eskibien. An unvaniez-ze eo a ro deomp ners a eneb hon enebourien, ha pa vezo calmet justis Doue, pa vezo goalc'het hor pec'hejou, e tevio sonch dezhan euz he drugarez hag e troio hor glac'har e levez. »

Bep sizun peurlissa e comz ar c'hazetennou euz a protestantet pe a dud divadez deut da veza catoliked. Bro-Zaoz dreist oll a guita an denvlijen euz an errol evit dont d'ar sclerijen euz ar guir ilis. E Aurillac, er sizun diyeza, eun demezel iaouanc a Vro-Zaoz e deus recevet evit ar vech kenta e Doue e chapel leanezet Carmez. En derveziou diaraog e doa dilezet pe kuiteat he fals relijion. Eur garez dezhi, ganet evel di e Bro-Zaoz, hag hirio leanez a urs Carmez, eo e deuz he c'helennet ha pourchaset he enq da receo Jesus-Christ er sacramant euz he garantez. He zad hag he mam, petra bennag n'int ket c'hoas catoliked, a voa daoulinet en he c'hichen, hag a ioa meurbet tenereet ho c'halon o velet eurusdet ho merc'h. Ne dlefet ket beza souezet e teufent da henilla ar skuer roet dezho gant eur c'hrouadur hag a garont kement. Pedennou ar verc'h, a eller da esperout, a denno, trugarez an Aotrou Doue, var an tad hag ar vam hag a lacai ar sclerijen da zisken en ho ene.

En eur scolach, dalc'het gant an Tadou Maristed, tost da Doulon, ez eus badezet er zizun dremenet daou Annamit iaouanc. Escop Frejus he unan a voa deut d'ho badezi. Netra caeroc'h evit na deo bet ar solanite-ze. An daou gristen nevez, leun ho c'halon a levez, a responte ho unan d'ar goulennoù a rer er vadiziant. Bez' e voa gantho pep a zae venn hir bete'n douar. Ar pennou brassa euz a Doulon a voa deut di evit ar vadi-

ziant-ze, ha lod anezo evit beza paeronet ha maeronezet d'an daou gristen nevez.

Comzet on euz er sizun dremenet euz ar gouel caer a voa bet e ker Amiens evit an aotrou'n Escop Daveluy, merzeriet e Coree. Eun hevelep gouel a so bet ive e Dijon an eiz euz ar miz, evit an Aotrou Bretonnier en deuz ive gouzanvet ar maro er memez amzer gant Aotrou Daveluy.

E Sant-Briec, e chapel ar scoliou christen, ez euz great, e mis c'huevrer diveza, eun *Triduan*, da lavaret eo tri devez roet d'ar beden ha da dostat oc'h ar sacramanchou, en honor d'ar c'huec'h merzer varnuguent euz ar Japon, nevez canonizet, ha dreist oll da dri vuguel a voa en ho zonez, Leiz, Anton ha Thomas, oajet unan a zeg vloaz, eun all a drizeg hag eun all a bevarzeg vloaz. Pii Nao en deuz ho roet evit patronet ha skuer d'ar vugale gristen. Ar chapel ma comzomp anezhi so consacret dezho ; eno ema ho relegou santel, hag e nep leac'h ne renter mui a honor dezho.

Calz eneou o deus bet grasou braz er chapel-ze, eme gazetennou Sant Briec, aleiz a dud clan so bet pareet, ha deut eo da veza eul leac'h a belerinach eleac'h ma en em blij Doue o silaou pedennou an eneou mad ha dreist oll ar vugale a deu di a vandennou d'en em erbedi oc'h ho fatronet santel.

Eun dudi oa gullet ar mamou christen o tont da guinnig ho bugale d'an Itron-Varia an *Alez* ha d'ar zaent, ha da lacat ho bano en *arme an Alez*, er vreuriez deol-ze e pehini edo ive ar vugale santel merzeriet er Japon. Ar vreuriez-ze, approuvet gant hon tad santel ar Pap, a so savet e chapel ar scoliou christen e Sant Briec evit ma tevi Doue da zional ar vugale-ze dioc'h ar pe-c'het, ha d'ho c'henderc'hel er feiz. G. M.

Eur Prosesion dre vor.

Disul pevar-war-n-uguent a viz c'hoevrer, Otro-n-Eskop Sant Briec a oa deut da guerik Pempoul evit rei sakramant ar gonfirmation, hag evit binniga al listri a dle eno deio-man kuitaat ar vro ha mont d'ann Island.

Ar goel-ze a ve kaer meurbed bep bla e Pempoul, pelec'h zo kement a dud a vor ; mes enn de warlerc'h a zo bet eno ar wech-man eur goel hep he bar betek'henn : eur prosesion dre vor.

Er beure-ze, ann Otro-n-Eskop a dlee binniga ar men kenta deuz eur chapelik hag a vo savet ellec'h m'ema hini ar Goz-Dreinded. Chapel ar Goz-Dreinded, evel a ouzer, a zo e parrouz Plaëranek ha war eur bek-douar a reer anezhan Porz-Even. Dez ar pardon dreist-holl (hag a ve d'ann tried sul goude Pask), eo braz-meurbed niver ar verdeidi hag ar gristenien vad a zeu di diouz koste Landreger ha Lannuon. Ar pez a c'houlont peurlissa eo bean gwellaet diouz ann droug-izili.

War ge Pempoul, eunn toullad bagou'ta, ouspenn daou-uguent anezhe, ha goloet holl a bep seurt rubanou

BUEZ SANT PAUL.

KENTA ESCOP LEON.

(*Eil pennad*).

Peden sant Paul evit goulen digant Doue hag hien a ioa galvet da veza escop, a voue great re galonec, evit ma chomje ep caout he goulen. Lavaret a reer e teuz eun eal a berz Doue he veteq, evit lavaret d'ez-han, n'eo ket ar vro m'a n'em gav-en-hi, eo an hini a zo destinet d'ez-han gant an Env. An Eal a lavaraz hoaz da Baul, e ranke dilezel ar vro-ze ar henta amzer hag ober scoliarn vouzar ken da gomzou ar roue, ken da gomzou ar bobl. Goude oll, eme an Eal, ne guemerit nec hamant ebed var al leac'h m'a tleit mont, rag me n'ho tilezin ket, ken o pezo taolet ho treid var an douar a dle Doue rei d'e-hoc'h da sclerijenna. Paul a dremenaz an nemorand euz an noz o trucarecat Doue da veza digasset d'ez-han eun evelep sclerijen, hag eyel ma tarzaz an deiz, e cassaz unan euz he veleien da guemen d'ar roue ar burzud arruet ganth an noz. Pedit a reo Marc ma casche mad e teuje da heuil ar sclerijen digasset dezhan euz an env, ha ma teuje dre n'hent-ze da zilezel he rouantelez. Marc a anaveze re-vad santelez ha furnez Paul evid hen lezel var guement-ze da vont kuit. Ne roaz ket eta d'ez-han he c'houlenn ; mez an nac'h-ze ne reaz nemed crenfat Paul er pez a c'houlennet. Mont a reaz eta, hen e-unan beteg ar roue, hag e lavaraz d'ez-han ditortil : « Roue, emez-han, sentet em euz ouzoc'h « var an heur p'o peuz va galvet da zont en ho rouan-« telez ; cavit mad ive eta, e teuffen breman da zenti « euz Roue-ar-rouanez, pa deu d'am guervel da vont en « eul leac'h-all. » Ar roue Marc neuze, gand calz a boan hag a zipid a roaz d'ar sant he c'houlenn. Kerent Paul a n'em laca en hent evit mont da gaout he c'hoar a ioa en en em roet adalec he bugaleach da servich Doue en eur gouent e kichen ar mor.

Hoant sant Paul voa mont euz al leac'h-ze goude m'en dije roet eur guelennadurez benag d'he c'hoar. Ober a reaz prest eta pourchas eur vak evit kemer ar mor. Setu aman eur mirac hag a erruaz, var a levereur, er mare-ze. Couent c'hoar Paul a ioa savet huel-huel var eun tor-nod, hoguen pa vije reveurzi vraz, ar mor en eur zont da bigossat ar guerrec, a deue da vouzari al leanezet. C'hoar Paul a ziskulliaz kement-ze d'he brehr, hag eman, dre eur beden, a reaz m'a na deuz mui ar mor nemed var hed eur c'hart-leo d'ar gouent, hag evel se eviziken al leanezet ne vouent mui diezet evel araok gand an drouz euz an oliou-mor.

Paul a dremenaz er beden an noz araok mont kuit. Da houlou deiz e sao en eur vag. Leun a fisans, ne guemer na pilot na sturrier ebed nemed e Eal-Mad, ober a ra sin ar groaz, lacat a ra da voel, sevel a ra an eor, ha prest al lestric bian a faout ar mor ken coantig a tra eb ma houez den var bez tu ez a. Kenta douar a erruaz gand ar vag-ze, eo douar enezen *Eussa*, eur c'houlenn leo benag euz costez Leon. Anat eo goulet guichegez ar pilot deut euz an env evit sturia pe leviat ar vag-ze ;

a zigemeraz ann Otro-n-Eskop, he vikel-vraz, ann Otro (Olivier, ha kalz a veleien-all gwisket e gwenn. A vec'h war vor, hag di-holl da gana (ha gant-he ar verdeidi) a greiz kalon hag a boez penn : Ann Aye maris stella, itanio ar verc'hez, kantik ann Itron-Varia kelo-mad, kantik ar Peskelaer. Dre-holl diwar vord ann od, adalek Pempoul bete Porz-Even, e tiskane ann dud out-he, enn eur gual pep eil mare : Meuleudi, enor ha karante d'hon Eskop ker mad a ker santel !

Ar greiz ar haer, war-dro eur c'hant bag deuz Plaëranek a c'hontoze prosesion Pempoul ; hag e peb bag ann oll voezio a responte da zon, kleier Plaëranek ha Pempoul hag ive da drouz ar c'hanonio bihan : Ra vevo n'hoanhouez gwir dad ann eskopti-man ! Ia ! enor, guez karante d'hon Eskop binniget !

Mes pebez levez, pebez dudi, pa erruaz ar prosesion e Porz-Even ! A bep tu neuze deuz ar bagou ha deuz ann douar, ann holl voezio en em unane, ha na glevet nemet ann emez k'li kalon :

« Bennoz ha mil bennoz d'hon Eskop ker ! Biskoaz aman Eskop na weljot : Bennoz, bennoz ha trugare !

Kerent ha m'oe diskennet, ann Otro-n-Eskop, tene-fact holl a zav war al lec'h huella e bord ann od evit binnig ac'hane kement hen heuille. Ia, merdead, labourer hag mor, douar, pep den, pep tra en deuz he vennoz, bennoz Jezuz.

Erru gand ilizik ann Dreinded, person Plaëranek, ann Otro Guennou, belek meurbed enoruz, a drugareka difak ann holl he dad ker hag he Eskop. Pebez eurvad, emez-han, ho kwelet, evel gwechall Sant Briec ha Sant Ingual, ho kwelet o tont dre vor da zigaz d'am bugale bennoz, fiars, karante Doue ! — Ann Otro-n-Eskop, d'he dro, a lavaraz da gement her c'hleve, e lake person Plaëranek war renk ar veleien wella ha santela deuz he Eskopti.... Hag an holl da grial a neve : Ra vevo c'hoaz pell enn hon touez gwir Dad ar harrouz-man ! Enor ha karante da viken d'ann Otro Guennou ! Goude ar c'homzo tener-ze, a rec skuill daero ha tridal ar c'halon, e oe binniget ar men kenta. Neuze, en eur tref adarre ouz tud kalonek ar bagou : Kenavo'ta eme ann Eskop santel ! Kenavo ha trugare ! ha setu va bennoz c'hoaz eur wech.

Ac'hane ec'h ez ar prosesion dre chapel Perrozhannou da vourg Plaëranek. Gwech-ha-gwech-all e tremenet dre zindan bolzo pe porjo lore, kaereet a kempennet enn eur c'hiz neve gant ranvio, higennou, listri bihan, rubano bezin pe wemon, garlantezenno pesked bihan....

Biskoaz redadek bagou na tra ebatuz na biljaz kement, na oe ker kaer. Hag evit gwir, ar goelio kristen, dishevel braz diouz re ar bed a zo bepret meurbed teneruz o lakat war-eunn-dro ha spered, ha kalon, ha krouer. Nann, biken er vro eun dez ker kaer na vo ankoacet.

J. M. H., belek.

Medalennou aour.

D'an aotronez : Kerros, mear Brest ; an doctor medecin Carof, euz a Vrest; Ar Marc'hadour, mear Conkerne; Echaliar, medecin evit an dud a vor ; Touchard, medecin evit an dud a vor.

Medalennou arc'hant.

D'an aotronez : Ar Guen, adjoent, e Brest ; Veillers, adjoent e Brest ; Michel Morand, mear Lambezellec ; Dubreil, mear Sant Marc ; an itron Denot, superiolez itronezet Sant Thomaz ar Guernevez, e Brest ; ar c'hoar Mari Cyril, superiolez ar seurezet guenn, e Gueznou ; an doctor medecin Miriel ; an doctor medecin Penquer ; an doctor medecin Lezeloue ; Caradec ha Lheraa, medecin, e Brest ; an Do medecin e Brest ; an doctoret-medecin Balestrie ha Guillou, e Conkerne ; c'hoar Sant Celestin, e Conkerne ; an aotronez Quere, Person ; Quemeneur ha Caroff vikelet e Moelan ; Alix, e Conkerne ; c'hoar Sant-Ian-Vadezour ha c'hoar santez Elizabeth, e Moelan ; an Itron Bremond d'Ars ; an doctor medecin Beaugendre, e Kemperle ; Lhomme ha Chevreuil, letanantet an archerien ; an Aotrou Monfort, person Lanveoc ; Goanac'h, adjoent Lanveoc, Lucas, chirurgian evit an dud a vor ; an doctor medecin Guillet, er Faou, Charuel, mear ar Faou ; an Aotrou Kerscaven, vikel e Kerhaes ; Revault, mear Kerhaes ; Mahe, medecin e Guipavas ; Crocq, medecin evit an dud a vor, e Odiern ; an doctor-medecin Louarn e Odiern pe Goayen ; Kerloc'h goard-champetr, e Odiern.

Medalennou Bronz.

D'an aotronez : Quinquis, infirmier ; an itron Marzin, e Brest ; an doctor medecin Danguy-Desdesert, e Landerne ; ar c'hoarezet Stephani ha Mari Perpetua, e Kemper ; Marec brigadier ar vatouterien, ha Vigot, Matoutier, e Kerity ; an aotronez Combot person, Roland ha Sann vikelet e Plomeur ; Lainc e Conkerne, P. Saulce e Plomeur, Bleiz e Douarnenez, Morvan, e Brest, Goasven, en arrondissement Montroulez ; Davin ha Guilmot, en arrondissement Castellin. Ar seis-ma so e penn an archerien el lec'hioù on eus hauvet.

Ervez *Cazeten ar Meziou*, an ed pehini a iea var gueraat, so bet chomet a za pe zoken diskennet eun dervez bennag e Paris hag e Marseil. E creiz ar marc'had oar deut da guinnig ed ha bleut eis real guelloc'h marc'had ar zac'had evit na verzet en heur-ze memes. Al labourerien ne vodient petra da zonzal. Kementse a voa eun taol c'hoariet gant lod euz ar varc'hadourien vraz evit lacat an dud divar ar meaz da zisken ho friz. Hag e guirionez lod a roaz ho ed var ar rabat-ze, lod all a voue guelloc'h gantho gorren. Var guementse *Cazeten ar Meziou* a lavar ne dlefe ket tud an departamanchou, er c'heriou bian kemeret skuer dioc'h Paris na dioc'h ar c'heriou bras. Oc'h hen ober e vezont tromplet alies. Evit clevet lavaret e ve eun disken braz avechou er marc'hajou bras-ze ne dlefent ober van, rag peurliessa eo eun taol bennag evelse tennet gant ar re a ra kenvers gant an ed.

An Aotrou Gadon, vikel e Riec, so hanvet person en Trevous ;
An Aotrou Boustouler, vikel e Plouarzel, so hanvet person et Botmeur ;
An Aotrou Bohic, beleg hospital Plougastel-Daoulas, so hanvet beleg Poul-ar-Bachet ;
An Aotrou Guennec, beleg bet var vor, so hanvet beleg hospital Plougastel-Daoulas ;
An Aotrou Kerloc'h, bet vikel e Combrit, so hanvet vikel e Riec. G. M.

Danevel eur C'horn-Butun.

Calz a gav da lavaret er butunerrien, ha c'hoaz muioc'h er butunerezed, ha cousgoude avechou eo mad caout corn ha butunn.

Eur vaouez euz a ghichen *Pomenou*, a denaz d'ezhi, n'euz ket pell, kemenadurez da vont da Paris, da di eur verc'h dimezet e doa eno, evit beza merounez. Setu fougue er vammik-coz, na petra ta ; pa deu da sounjal mad cousgoude, e kuez nec'hamand var he spered. Ne c'hoar tam ar gallec-fin, ha zoken ne anavez ket he mab-caer. Penaus eta dont a-benn da gaout ti he merc'h, eur vech erruet er *Car-Veur* ? En eur c'houlen ez ear pell, a lavare *Ian-goz*, gouech-all ; Mez petra dâl comz brezonnec e Paris ? Couls eo saosmegat.

En eun taol-count e teu eur sclerijen e spered ar vam-goz. Sel, emez-hi ? netra essoc'h !... Hag-hi da lacat scriva d'he mab-caer, dont an deiz-man-deiz d'an hent-houarn d'he diambrouk. « Pa velfet, emezhi, en he lizer, pa velfet e touez ar beachourien diskennet euz ar hiri-tan, eur vaouez, eur c'horn gant-hi en he bek, lavarit eo me e vezo. »

Antronoz *Fanchon-goz* az ia en hent, ha douguet gant kiri-an-diaoul, en em gav buan e Paris. Ker-kent e ten he c'horn, hag en em laca da vutuna ken na deue'r moghed euz he bek goaz eghed euz siminal eur fourn raz. Cousgoude ar veachourrien diskenet euz an hent-houarn a n'em denne ac'hano, darn a gleiz ha darn a ziou. Mez den na deu da gaout *Fanchon*. — Abaffet-oll gand he nec'hamand, e teu d'ezhi lavaret en eur sellat euz he *fiben* : « Daoust piou eta, a anavezo ar c'horn-man ? » N'eo ket lavaret mad gant-hi he gir, ma teu eun aotrou braz da n'em deleur etre he divrac'h, en eur lavaret : « Me, va mam, emez-han.

Claostre, *Fanchon*, ne daolo ket buan he c'horn euz ar voguer. SINTOU.

PRIZ AN ED.

KEMPER. — 25 Meurs.

Priz ar c'hant liour.
Guinis.... 45 lur, 10 c.
Segal..... 9 lur, 34 c.
Eiz..... 9 lur, 76 c.
Ed-du.... 7 lur, 46 c.
Kerc'h.... 9 lur, 06 c.
Avalou-douar 4 lur, 50 c.

PONT'NABAT — 24 Meurs.

Priz ar c'hant liour.
Guinis.... 45 lur, 52 c.
Segal..... 9 lur, 38 c.
Eiz..... 9 lur, 88 c.
Ed-du.... 7 lur, 70 c.
Kerc'h.... 9 lur, 75 c.
Avalou-douar 4 lur, 25 c.

Ar Gerant: AR. DE KERANGAL.

Kemper, moulet gand Ar. DE KERANGAL, Moullier an Escopti.

FEIZ HA BREIZ,

KREOL A BEP BRO, HA KENTELIOU VAR BEP TRA,

DIGASSET BEP SUL

Da guement Christen a goms ar brezonnec.

Eun Abonnamant d'ar Gazeten a goust :

Evit un bloas..... DAOU SCOUET.
Evit c'huoc'h miz..... EUR SCOUET.
Evit tri miz..... C'HUOC'H REAL.
Evit gazeten ebken..... DAOU VENNEC.

Abonnamant a dle beza great araog caout ar gazeten.

KEMPER, 6 Ebreul 1867.

An dud difeiz ne eanont da grial a enep ar c'houenchou Brezonnec, scrijou, ne espernont netra evit dua mar gallent, brud mad an dud-ze a ziles pep tra evit mont da dremen ho buez er binijen, er beder, o kelon ar vugale, o soursial eus ar re glan. Petra da ober gant bugale savet gant leanezet, gant relijiozet gant bugale savet e doujans Doue, boazet da bidi Doue noz ha mintin, boazet da ober pep tra er guel a Zoue, gant santimanchou a feiz, gant bugale ha n'o deus bet ken nemet eun descadurez christen ? Gant bugale evelse ne datemp tam var araog, chom a rafemp ato da veza ar pez ma voa hon tadou coz ! E guirionez, bugale hag o deus bet eun descadurez vad ha christen ne dalont netra da ober dispac'h, da skigna an dizurs hag ar pec'het dre ar vro, hag enebourien ar feiz hag ar relijion a voar ervad penauz evit distruja ar feiz hag ar relijion en eur c'harter e ve red he munga e calon ar vugale.

Guella zo eo ar bopl, a drugare Doue, ne deo ket diskiant avoalc'h evit silaou ha cridi an dud difeiz-ze. An tadou hag ar mamou a oar ervad penaus bugale savet e doujans Doue o devezo ive muioc'h a zoujans evitho, a vezo sentussoc'h, a raio muioc'h a blijadur hag a honor d'ho c'herent. Gonzout avoalc'h a reont eur map, eur verc'h hag o devezo recevet eun descadurez ep feiz ne oufent nemeur mancout d'ho disprijout divezatoc'h pa en em velint desketoc'h evitho. Ha kementse so ker guir ma velomp aliez ar re o deus nebeuta feiz, nebeuta relijion, bete zoken ar re a gri a enep ar c'houenchou, o cas ho bugale da zével ha da guelen d'ar gouent !

Bez ez eus couenchou all a enep pere an dud difeiz ne leveront guer ; hag ar c'houenchou-ma ne ket c'hoez ar chastete, ne ket monez ar beden, ne ket trouz ar binijen eo a glever enho. Ne ket evit ober anaout ha caret Doue d'ar vugale ; ne ket evit lacat he

ALIOU.

Ar scrijou a ve c'hoant da lacat er gazeten a dleer da adressi oll d'an Aotrou MORVAN, Beleg e Kemper.

Ar paeamanchou a dleer da adressi d'an Aotrou SALAUN, ebken. An abonnamant a guemerer e ti an Aotrou SALAUN, librer, ru Kereon, e Kemper.

vuez var var o vont var dro tud clan ; ne ket evit dilezel ar bed, he vadou hag he blijadurezou eo ez ear enho, mes evit teleur tro var dro ar c'hontam mezuz euz ar brassa dizurs. Hoguen d'ar re-ma an dud dizoue n'o deus rebech ebet da ober. Ha perag ? Ne ve ket diaz marteze he lavaret. Ar c'houenchou-ma so muioc'h anezho evit euz ar re ma comzer a enep d'ezho, hag an niver euz ar re a ia d'en em goll enho so brassoc'h evit hini ar re a ziles pep tra evit mont da zervicha Doue. Hoguen evit an dud ep relijion ar brassa droug eo ar guella. Mes an darn vuia ne zonzont ket evelse.

Ne ket evelse a zonzje a re a iea er zizon all, e Paris, d'ar vered varlerc'h corf eur c'hoar dister euz a Sant Visant a Baul. Bez'ez oa gousecoute carroziou, tud a reng huel, eun niver a dud brassoc'h evit an hini a vez guelet oc'h heul corfou ar brinset pa ho c'hasser d'an douar ; bez'ez oa dreist oll peorien hag a vouele druz d'ho madoberouez.

Ne ket evelse a zonzje tud keriou Coutans ha Caen, eun nebeut derveziou zo, o renta da gort eur breur dister euz ar scoliou christen, muioc'h a honor evit na renter d'ar re vraz eus ar bed. Ar iaouankis da behini en doa desket he deveriou christen, ar pennou a di a bere en doa savet ar vugale a ziskueze eno ho anaoudeguez vad.

Keit ha ma chomo e calonou an dud eun tamig feiz, eur zantimant vad bennag, ne allint ket miret da garet ha da istimout an dud-ze a ziles pep tra evit renta servich d'ho breudeur, evit deski doujans Doue d'ar vugale, evit kemeret soursi euz ar re glan, terri naoun ar re izomeg, ha sicour evelse tud ar bed da zonguen eur beac'h hag a gavont ker pouner.

An dud difeiz a lavar evel kent d'ar bopl, d'an dud a reng izel, ne glascont nemet ho mad, eo evitho e poanont, e labouront. Ne espernont na comzou, na scrijou, na gueier a nep seurt evit rei dezho kementse da gridi ; epad ma reont ho gallout evit lamet di-

gantho ho feiz hag ho relijion, evit lamet euz ho zouez ar re a ra e guirionez vad d'ezho. Setu penauz e comz ar gazeten *Revue de la Presse*.

Gouscoude an descadurez, ep ar feiz, a deu aliez da veza noazuz d'an den, p'eo guir e laea etre he zaouarn eur benveg muioc'h da ober droug. Euz a bep tra ec'h eller ober goaf uzach, euz an traou gnella zoken, hag an descadurez so unan euz an traou-ze. An hini n'en deus ket a relijion a vezo tentet d'en em zervichout euz ar pez a voar evit ober fallagriez.

Eun den diteiz a lavare en dez-all, evit diskuez pegument a izom o deus an dud da gaout descadurez, e voa bet laeret cant lur divar goust greg eur marc'hadour, hag ar c'hant lur-ze a vije chomet ganthi ma e divije gouezet lenn. Ar c'hreg-ze e doa recevet eul lizer hag a voa enha eur billet a gant lur. Evel na elle ket he lenn he unan, hen roaz da lenn da unan euz ar re a voa en he stal o prena marc'hadourez. Hema hen lennaz hag a zavaz ar billet a gant lur. Ar c'hreg her gouezas goude; mes rezivezad edo. Ar scrifagner a lavar var guementse. « Guelet a rit-hu ez eo red caout descadurez dindan boan da veza tromplet ha laeret pa zonzjer nebeuta? » Guir eo kementse; mes petra da zonzjal euz al laer pehini en em zerviche euz he zescadurez evit ober an dro gam-ze? Ar c'hreg-ze, eme c'hui, ne vije ket bet laeret ma e divije gouezet lenn. Guir eo, mes al laer-ze, ma n'en divije ket gouezet lenn, n'en divije ket bet a dro da ober he laeraden.

Caeroc'h a alfen da lavaret c'hoas var guementse. Ervez ar memez gazeten, brema ez euz eur pennad e varvaz en unan a brizoniou Londrez, e Brozaoz, eun den hag a ioa bet condaonet da guenta d'ar groug, ha goudeze oa bet chenchet evithan ar boan a varo en eur prizon a dlie padout keit hag he vuez. Great en doa eul laeronsi-vraz, unan euz al laeronsiou-ze a gas an torfetour d'ar gorden. Goude ar varnediguez, al laer, casset d'ar prizon, a c'houlennas comz oc'h ar barner en doa he gondaonet. Ar barner a deuas d'he gaout.

— Aotrou barner, eme al laer, n'em anavezit-hu ket? Bet omp gouscoude er memes scolach, hag er memes clas edomp. Me eo an hen m'an hen. Abaoue ma rean ar vicher e deus va digasset ama, em oa chenchet hano.

— Ia, eme ar barner, dont a ra da zonzh din. Gant ho paro hir hag ho trem droug-livet n'oc'h anaien ket. Brema a vad hoc'h anavezan.

— Sonch oc'h eus-hu euz ar re a voa er memes clas ganeomp? Edouard, Jorj, Harris?

— Oh! sonch avoalc'h, hoguen n'em eus ket ho guelet abaoue. Gouzout a rit-hu petra int deut da veza?

— Ho zri int bet crouguet. Ne deus mui beo euz hor c'hlas nemet c'hui ha me.

Ar barner a ruzie; mez en doa, ha nec'het braz en em gave. « Mar guellan, emezhan d'al laer, e virin na viot crouguet, setu kement a ellan da ober evidoc'h. » Hag evel on eus lavaret, an torfetour a vone dalc'het er prizon beteg he varo.

Setu aze tud ha ne ket gouezieguez a vanke dezho;

hoguen mancout a rea dezho feiz, doujans Doue. Pe seurt kentel da denna a guementse? E ve guell beza dizec' evit caout descadurez? Nan, pell dioc'h eno. An descadurez so mad, so red zoken he c'haout a eller da lavaret. An descadurez avad so red da gaout eo eun descadurez christen, heuillet gant doujans Doue, sclerijennet gant ar feiz; anez e c'helfe ober mui a zroug evit a vad. Ac'hano e c'hell an tadou ha mamou sonjal e tleont evessat mad da rei ha da lacat rei eun descadurez christen d'ho bugale, ne ket mui a boan ha marteze mui a zizhenor a rofent dezho goude beza bet desket evit n'o divije great ma n'o divije gouezet netra. Ac'hano e tleer c'hoas sonjal hag anaout pegument a vad a ra ar re en em ro, er c'houchou hag e leac'h all, da zével, da guelen ha da ziorren ar vugale e doujans hag e carantez Doue.

Missionou. — Goude Breuriez ar Feiz, ar Vreuriez a ra hirio mui a honor d'an Ilis catolic, eo Breuriez ar *Vugaleach santel*. Da viana n'eus nicun hag a gasse kement a eneo d'ar barados. Nag a bet mil buguel tennet bep bloaz a dre skilfou an droug-speret! Badezet pa vezont dare da vervel, ez eont didach dirag Doue, hag en Env e roint epad an eternite mil benno d'ar re o deuz ozavetet. An Aotrou Perny, vikel abostolic ar Chin abaoue ouспен ugent vloaz, a gomze n'eus ket pell, dirag eun niver braz a dud vraz hag a vugale, euz ar vad burzuduz a ra ar guennegig-se a roer er vro-ma en hano ar vugale gueiz er broiou paien, dreist oll er Chin. Ar vro-ze so kement a dud enhi! Bez'ez eus *Provinsou* hag a so kement a dud en unan anezo evel a zo e rouantelez Frans oll. Nag a vugale so eno dilezet, nag a vugale a varf bian! Mes ive nag a vugale, ha zoken bugale d'ar baianet a vez badezet bep bloas! En eur brovins epken e vadezer bep bloas tost da ugent mil. Cals mervent a vez eno etouez ar vugale, dreist oll e daou vare euz ar bloas. Savet ez eus medicinet euz a dud ar vro pere so ho dever hag ho micher mont var dro ar vugale glan-ze. Ar vedecinet-ze so anezho brema tri-c'hant antercant. Mont a reont daou ha daou d'ar c'heriadennou var ar meaz da louzaoui ar vugale glan, hag e vadezont meur a hini bemdez. Er c'heriou braz ez eus tiez eleac'h ma caver e pourchas an oll louzeier a ell ober vad d'ar vugale gueiz-ze. Ar gatekizerien so ive carguet da evessat evit na varvo ket a vugale ep gras ar vadiziant. Bez'ez euz ive tiez evit diguemeret ar vugale dilezet. Nag a eneo eta savetet dre ar vugaleach santel! Ha c'hoaz ar Vissionerien a so er vro-ze a lavar oll: Nag a eneo ne zavetefchemp ket c'hoas ma or bije an anter, teir guech muioc'h a vedecinet a douez ar Sinaiz, ma on divije bet muioc'h a diez evit diguemeret ar vugale dilezet!

G. M.

BREMA HA GUECHALL.

Ia, guir eo; en hon amzer e rear calz a gaosiou var benn al labourerien. Hiniennou, me gred, a glask ober

vad dezo. Meur a aotrou a hell beza e kear hag e leac'h all, hag ar c'hoanta e guirionez dizamma eus nebeut an dud keiz a c'hounid ho bara o trei hag o tistrei ho zamou douar. Mil bennoz d'ar re-zeou, ha plijet gant Doue ho loja eun dez a zeu en he Varadoz: n'hellan ket goullenn guell evitho. Mez hiniennou all a zo hag a vez en ho ginou muioc'h a gaosiou caer var gont al labourerien, eget a c'hoant en ho c'halon d'ho gueled en ho eaz, d'ho zével var gorre an dour.

Daoust d'ar pez a zonz an dud, ia caoz ha caoz vraz a glever var gont al labourerien douar, var an doare da labourad guelloc'h an douar, da gaoud caerroc'h dre vajou en douar, muioc'h a foenn er foenneier, puilloc'h eost er parkeier.

Grit an dra-ma, eme unan; hadit er c'hiz-ma ho touaron, ho tachennou; grit pengennou braz, na zraillit ket kement ho parkeier; claskit eun teil all, eun tremp all, ludu du, ludu melen; gounezit muioc'h a banez, a velchen, ha nebeutoc'h a hed; savit, magit muioc'h a chatal, a loned corn, saout, ejenned; kemerit eun draillerez lann evit ar goanv, prenit eun dournerez evit an hanv, ha lezit ho freillou a gostez; freillou a zo traou re boanuz an oll; espernit, damantit divreac'h an dud, ha taolit ar zam var gein ar c'hezec; ar re-ze ho d'euz nerz, galoud, roit muioc'h a ear da greier ho loned, muioc'h a hueder d'ho tiez hoc'h-unan; savit grignolou braz evit loja ho cream guiniz, eiz, keroc'h..., na lezit ket an teil ken tost d'ho tiez, ken teo e creier ho loned; an dra-ze n'eo ket iac'huz nag evit an dud, nag evit ar chatal; grit guelloc'h cundu, roit ho patatez d'ar zaout, d'ar moc'h, ha debrit c'houi muioc'h a gik, a gik ejen dreist oll, ejen lard, ejen druz...; neuze e savo nerz ganeoc'h, ho pezo, guelloc'h liou, caerroc'h doare, e vezot muioc'h guelet, e vezot tud euz ar c'hiz, ec'h hellot caozeal gant an aotrouien, ho pezo digor e tiez an dud chentil... Mar kirit oc'h penn en em zizober euz ho prezonek, eur iez sot mar d'euz var an douar, eur iez mad da hirra evit tud gouez, mar kirit deski gallek, gallek kear, gallek euz ar guella, oh! neuze c'houi a vezo tud evel n'euz ket nemeur, labourerien dioc'h an dibab, evel n'euz ket marteze var dro Pariz...

Ah! va zud m' d, c'houi a gaoze ker brao ma rit d'an dour dond em ginou! Ah! ia, ma carfe, ma helfe couer en em lakad evelse ker brao, ken drant, beza aotrou var an douar! Caoud bepred bara guenn eleac'h bara torz; amann teo, amann fresk var he vara; kig leun he graban eleac'h patatez ha taltez, traou ken dizaour, a ro ken nebeut a lard d'ar c'hof; ber ha rost eleac'h poullidik, eun dra all hag a zo ker blank; tiez brao, tiez caer, da loja; maneriu, pe dost, d'he chatal; foenn, a stok e pep foennek, eost a verniou e peb park... Oh! neuze, ha pa rankfe caozeal c'hoaz e brezonek, chaokad c'hoaz coz brezonek ar vro, neuze couer a ve laouen; couer a rafe daou, tri gorniad eleac'h unan; a evfe guin coz eleac'h n'ouzon petra, eleac'h eun tam tra briz-du, briz-ruz, briz-melen, a grog kement en he c'houzoug, a grign, a zebr he stomok, e laka clanv goaz eget eur

pemoc'h, hag a denn gouscoude forzik arc'hant euz he c'hodel. Mez, allaz l, va zud keiz, aon hag aon braz am euz na veac'h c'houi, gant hoc'h oll madelez, hoc'h oll deneredigez evit couer, o conta dezan ar pez a c'halvin-me farserez, rimadellou toull, conchennou c'houezet, evel am euz elevet liez a veach guechall gant va zad coz e kichen an tan, pa veze ien an amzer hag hir an noz.

E pelec'h nemeur euz hor bro-ni, va aotrouien, e ve cavet tu brema da ober evel a lavarit? An atanchou braz hag hi a zo stank en hon touez, dreist oll en eul loden a Leon, dreist oll en Arvorioù? Gouzoud a rit-hu, pe ne ouzoc'h-hu ket eo diez, diez en hon amzer, e nousped a barrez, caoud eun nebeut dervezioù arat douar tom da labourad? Ez eo eur merour braz an hini en d'euz var he gont daouzek, pemzek, ugent devez arad a zouar hed? Ez euz eun niver mad a labourerien n'ho d'euz da labourad nemet tachenn ama, tachenn aont, eun tri pe bevar parkik, hag a goust sul muioc'h ma vez nebeutoc'h anezo? Ez euz a bep tu eun toullad geunioù, goarimeier treud, eur maread a zouarou ne zeu enn-ho nemet eun tam peuri signac'h, a bep an amzer, eun nebeut lann dizaour, tammou segal dister ha tano? El leac'h ma vez ker bihan an atant, penaoz ober pengennou braz, caoud an oll dre vajou ken coz, ken nevez; parkadou caer a viniz; broiou melchen, panez, caol-ruvia da garga gran-chou huel ha ledan; sevel kement a chatal ha dond da veza aotrou? Eur mondian bennak a hell ober dioc'h ho lavar, arad, gounid, c'hoenna, dourna dioc'h ar c'hiz nevez; mez, a gant merour, tri-ugent, marteze pevar-ugent a ranko c'hoaz, eun tachad brao, me gred, var meur a gant heuilla an c'hiz coz, selled piz oc'h ho godel abarz ober dispignou chansuz. Eun aotrou braz, den a leve, bara dezan ha kig, ha calz a draou all var ar planken, a hell kemered traou nevez, chench doare d'he draou coz, brasad, huedad he greier hag he c'grignolou; difounta he zouarou, he barkeier, digeri caniou en he barkeier evit ho dizour; planta teil en he foenneier evit ma roint muioc'h a foenn, ha guelloc'h foenn, foenn euz ar c'henta eleac'h brovan ha raosel; a bello teuzi cant scoet, daou c'hant scoet, mil scoet, mar car, en eur park douar fall evit ober anezan douar guiniz, douar panez. Mez eur c'hezic divar ar meaz, eun denik n'en d'euz na leve, nag arc'hant o kousked en he armel; en d'euz bugale da vaga, da viska, da scolia; a vez berr abred an hed en he arc'h; n'en d'euz nemet eun diou pe deir vioc'h, eur c'höz lonik mad a boan evit eur c'hivijer ler; hag hen a ielo, evit heuilla eur c'hiz nevez, da forani he venneien divar netra; da stlapa pemzek scoet, ugent scoet en eur voarem, en eur prat, a roi dezan da hirra talloudegez eun dek pe zaouzek scoet abenn fin ar bloaz?

Hogen, e meur a barrez, ha ne ket an dieien vihan, ar verourien vihan eo a ra an niver brasa? Gouzout a rit-hu neuze, va aotrouien vad, petra eo buez eun tiek dister; penaoz e cas ho amzer, peger braz eo poan eun darn dud a labour goalc'h ho c'halon, hag a vez bepred dindan ar zam, abalamour ma'z eo bihan ha ker ho zam

atant ? Ma na ouzoc'h ket, clevit eta eur briz son, savet a nevez gant *Laouik An Dero*, unan euz va c'hamaraded, eun den honest mar d'euz er bed, mez er memez amzer eun den a skiant hag a spered, eun den a oar petra eo beva, pegen diez eo beva a blasou. Me ne roin deoc'h nemet comzou va c'hamarad ; eun aotrou bennak a gear, eur muziker caer evel ma'z euz kement e kear, a hello caoud an ton a fielo dioc'h ar zou, ha, mar bez ho faltazi, c'houi a ganô en ho plijadur ar pez a zo ama varlere'h.

An dieien vihan.

Nag hen zo trist, trenk lion doare,
Er goanv, en hanv, e peb mare,
Ni tud dister, tieien geiz,
Ma na vez stard ha beo hor feiz !
Ker ha ker eo hon atantik,
Hag lion aotrou a zo jurdik,
Ha Gouel-Mikeal a gav he dro
Bep bloaz d'he zeiz da zond er vro.
Da denn ma vez hor labouriou,
Da ien, da dom hon derveziou,
Gant bara groz eo red beva,
Nemet dour selear n'euz da eva.
E tiez soul ni vez lojet,
Gant pri, gant teil ni vez louzet ;
Tud kear ouzomp rall na zellont,
C'hoez hon arc'hant ma na zantont.

Ne ket ma ve eun dishenor,
Nag er menez, nag en arvor,
Beza er park o labourad,
Gueach o cleusia, gueach o palad.

Salver an dud, perc'hen an aour,
En d'euz corfet, a zo bet paour ;
Hogen beva evel Jezuz
N'hell ket beza eun dra mezuz.

Nan.... voal ober, ha netra ken,
Eo a ziscar, a laz an den,
A goll bourc'hiz, mear ha barner,
Kere, kacouz ha kemener.

Mez bezomp tud betek ar meud,
Christenien leal, christenien reud,
D'ar red, ha ni ginaoueien,
Ni zeu re bar d'an aotrouien.

Eur mestr a zo evit an oll,
Na lez netra da vond da goll,
A bae peb den, ken teo, ken moan,
Dioc'h he labour, ervez he boan.

Da biou neuze gloar, euruzded
Er Baradoz gant an Dreinded,
Nemet d'an den, d'al labourer
En d'euz ker stank poan eur merzer ?

A vez dalc'h-mad sammet he gein,
Gant goad he dreid a liv ar vein,
A freuz he ler, da heul he brez,
Hag oc'h ar spern, hag oc'h an drez.

A vez er meaz dre bep amzer,
Dre scorn, dre erc'h, ha dre domder,
Guisket tano da bep mare,
Coulz e genver hag e gouere.

A vrej he gorf dre ar strejou,
O reded foar ha marc'hajou,
Gant nerz an heol a vez rouzet,
Gant ar glaç pil a vez treuzet.

A rank ober pred mollarjez,
Nouped ar veach, gant palatez,
Ker berr e vez he c'hounidou
Dioc'h ma c'houlenn he izommou.

Kement e coust da eur merour,
Bihan he dra daoust ma labour,
Sevel paotred, sevel merc'hed,
Hag e clenved, hag e iec'hed.

Prena dillad, rei magadur
Da bevar, pemp, c'houec'h crouadur,
Evit ho zreid caoud bouteier,
Re ler, re goat, ha lereier.

Paea mestr scol, paea levriou,
Eun niver brao a vloaveziou,
Ma vouezo mah drailla gallek,
Ha merc'h lenn mad ar brezonek !

A vel re stang he baotredou
Beuzet, collet en ho daelou,
O vont tud fur da zoudarded
Hag o tistrei guir ganfarted.

Hag a gendalc'h, ep grosmolad
Da c'houzaon poan, da labourad,
Gant eur spered a binijen,
Evit gounid he gurunen.

Oh ! den a vev dioc'h ar seurt giz,
Den a ra hent gant ar seurt tiz,
A dle paka, me gred ervad,
Eur c'hornik coant e ti hon Tad.

E ti hon Tad euz an Envou,
Eun ti a zo leun a vadou,
Eun ti hep doan hag hep chastre,
Eun ti hep trouz hag hep guidre.

Chommomp eta labourerien,
Bepred honest ha christenien ;
Na glascomp ket beza tud kear,
Dre hor meziou euz guelloc'h ear.

Ah ! va c'hamarad Laouik, guir, re vir eo ar pez a lavarit, hag o lenn hepken ho comzou me zant an dour o c'blebia va daoulagad ! Nan, ne ket an oll labourerien eo a vezo c'hoaz en ho eaz ; poaniou an dieien *guechall* a zo c'hoaz poaniou an dieien *brema*, dreist oll *an dieien vihan*, evel m'ho galv Laouik.

Mez gant va mignon me lavarô ivez n'ho d'euz ket nemeur al labourerien baour leac'h d'en em glem, keit ha ma vezint guir gristenien ; ho foaniou *brema* a dalvezo dezo e Baradoz Doue ; ho faourentez *ama* a rai ho

danvez er bed all, ho gloar e barz en Env. Mil ha mil bennoz deoc'h evelato, va c'hamarad Laouik An Dero, evit an tammik saour a lakai ho comzou e calon an dieien vihan.

AN DILONTIEGEZ

(EIL PENNAD).

Onz penn ann droug e ra ar vezvierien d'ezho ho-unan, pegement na reont hi ket d'ar re all dre ho dievedez, ho zotoniou hag ho fenn fall ? Na da bed a verc'hed hag a vugale n'eo ket bet gouall dretamanchou ho goazed pe ho zadou, pe ive ar viser pehini a zalc'h tost d'ann tech-ma, kiriek d'ho-marô ? Da bed ne ket het ar vezventi abek d'en em laza ho-unan ? Kant exempl a gement-ma a hellfenn lakaat ama.

Layaret am euz, enn divez, ez eo ar vezventi eunn abeg a revin evid ar familou hag a viser evid ar vro. Netra guiroc'h. Eur veach m'en deus eur penn tiegez lezet ann tech mezuz-ma da gaout beli var-n-han, na hell mui ober netra a vad ; he famil a zo meurbed e danjer evid ann amzer da zont, rag, ententit mad, ar vezventi ne d'eo ket evel elez a dechou all pere a zeu da zistana gant ann oad : kreski e ra, er c'hontrol, gant ann amzer, ha seul vui e teuer var ann oad, seul diesoc'h eo he zrec'hi. *Neb en deuz evet a evo*, eme ar proverb, pehini evelato na dle eur ket kemerout ger-evit-ger, rak guelout a rear mezvierien oc'h en em gonvertisa, mes an c'honversionou-ma a zo diez ha na vezont great nemet dre c'hrassou special. Ar mezvier na oar espern nag amzer nag arc'hant, Pa vank ann arc'hant, ann dillad, ar benviji, ann annez pe ar meubl, holl e vezont guerzet ; na respet ket zoken ann traou ouz pere euz stag sonjou ar re brisusa : guelet euz bet mezvierien o verza guallier eured ho grazez paour. Anavezet am euz memes mezvierien hag ho deuz guerzet bete tam bara diveza ho famil evit goalc'ha ho drog-ioul mezuz.

Penaoz ec'h hello eur penn tiegez kas he diegez enn dro, ma zeu, evit heulia he dech argaruz a vezventi, da dremep eunn darn euz he zerveziou enn hostaleriou ? Nag a amzer kollet gant he labourerien epad ne ma ket gant-ho ; nag a labour great fall ; nag a draou prodiget ! Penaoz ec'h hello-hen lakaat he respeti gant he vugale, gant he zervicherien, gant he labourerien, pere o devezo he velet mezo ? a be vir ec'h hello-hen ober rebechou d'ar re en em gunduo fall, pa en devezo roet he-unan ar goall-skouer.

Anad eo pa ho deuz ar vezvierien revinet ho famil, e skouezont var gein ar vro, pa'z eo guir penaoz greg ha bugale n'ho deuz ken moien da veva nemet o vont da klask ho boued. Setu a-ze ar penn-kaoz euz a viser hag euz a gresk ar beorien e Breiz ; ac'hano e kredann gellont lavarout ez eo ar vezventi eunn abeg a revin evid ar familou-ze, hag a viser evid ar vro. Guelomp brema gouall zilerc'hion ar vezventi evid ar pez a zell epken euz ar c'hory hag euz ar bed-ma,

ha lekeomp hor poan da gompren ar bouez euz ar c'hollou a bere eo kaoz dre eur gont eaz tre ! Lekeomp eul labourer douar pehini na vezv nemet d'ar zull (ar pez so c'hoaz goasoc'h eguet mezvi d'eunn diez pemdez) q'ha pehini goude a goll he vintivez d'al lun, ha prizomp eur skouet ann dispign-enn arc'hant hag ar c'holl hamzer. Euz skoed ar zizun, a ra daou skobed hag anterkant ar bloaz ! Ma tene dije al labourer douar ma lekeat bep sizun he skoed er vouestl espern (e gallek *caisse d'épargne*), adaleg ginivelez he genta krouadur beteg he vloaz var-n-ugent, ar som-ze a vije savet gant al leveou lezet ho-unan da zouguen leye, da c'honezek kant skoed var dro, gant pere en dije gallet, pe ramplasi daou euz he vugale euz ar zervich soudard, pe argoulaoui deread unan euz he verc'hed. Pegement a gav d'ehoc'h ez euz a vezvierien hag a ra gant eur skoed ar, sizun ho dispignou ? Ann niver anezho, neket braz. Pa c'hoarier enn hostaleriou, ar pez a c'hoarvez aliez, ann dispignou a zav hueloc'h c'hoaz. Nag a dud iaouank pere a laer ho c'herent evit kaout arc'hant da c'hoari ha da gout evach ? Pa zeu ar guerent d'en em glemm, ha n'euz ket a vir da lavarout dezho : Da biou ar lazi, ha na eostit-hu ket ar pez hoc'h-euz hadet ?

(Eur pennad all eur wech all).

Eur re vontou voulouez

Ar marvaillo-ma war-lerc'h, bugale, a zo bet savet enn amzer ma veve tad va mamm-goz. He-ma, war a lavarar, oa ar gwella da varvaillat ; n'oa par d'ezhan da zivuz ar vugale. Ann dud iaouank ar merc'hedou hag ann dud koz, zo koantoc'h a ioa ebad gant-ho klevet anezhan araok staga gant-hi, mont goustadik d'he c'hodell, tenna goustadik he vouchouer, c'honeza he fri meur a veach, pasaat a zeou hag a gleiz, tenna he dok pe he voned hag ober sin ar groaz, en dra m'edo pep-hini o klask ann tu eaz.

Grik brema, eme-z-han, setu em ouz gant-hi.

Tost d'eur vourc'h, n'ouzoun mui he hano, ez oa o chom gwechal eunn dicheutil hag en doa eur verc'h penn-hercz. Hou-ma, Berc'hed he hano, a ioa iaouank-flamm, kaer-meurbed ha fur evel eunn elik ma'z oa. Hevel buez oa e pep tra oc'h he mamm. Berc'hed n'oa nemet seitek vloaz pa varvaz he mamm digant-hi.

A-benn daou pe dri bloaz goude, ann dicheutil a lekeaz enn he benn dimezi adarre. Hag hen mont da welet ha da zarempredi eunn intañvez a ioa o chom tost eno, ha goulenn anezhi ; ma oe great ann eured ha dimezet ar markiz gant ann intañvez. Hou-ma a ioa rok ha morgant hag he diou verc'h evel-t-hi.

A-benn eur pevar pe bemp miz goude-ze, ar vamm-gaer, gwarisi leiz he c'haloun oc'h Berc'hed dre ma'z oa kaeroc'h evit he diou verc'h, a gave mad kaout digarez d'ober gaou out-hi enn eur he dieza, enn eur he gwall-gas bemdez. Berc'hed a ranke entent oc'h pep tra enn ti : gwalc'hi, al listri kegin, skuba ar

skalierou, frota ha koara ann annez e kamb ann teir loudourenn-ze. Kaer e doa ar vamm-gaer, Berc'hed ne lavare ger nemet skuilla d'elou hep ober klemm d'he zad. — Petra d'ezhi e leal ober klemm d'he zad? Gant an itroun edo ar bragez; anez e vije bet etre ann daou bried trouz ha talabao ha traou-all m'oarvad.

Poa great he zamm labour gant-hi, Berc'hed a iea da azeza e korn ann oaled e-kichenn Azor ha Moutik. N'oa d'ezhi divuz e-bed ken nemet ober flourik d'ho c'hein; hag ar c'hi hag ar c'haz d'ho zro a rea fistoulik d'ho mestrez koant. Rak-se tud ann ti a lavare ez oa eul luduenn.

Gwisket fall evel ma'z oa, Berc'hed evelato a ioa kaeroc'h evit he c'hoarezed; hini anezho n'oa par na tost d'ezhi. Taget e oant gant ar warisi, kouls lavaret.

Tennet euz a VIGNOUN AR VUGALE.

Eur pennad all eur weach all ha ne vezo ket pell.

A. TROUDE.

Hano ar Zant evit ar Sizun-ma.

- DILLUN, 8 EBREL. — Euz an deiz.
- DIMEURS 9. — Euz an deiz.
- DIMERC'HER 10. — Euz an deiz.
- DIZIQU 11. — Sant Leon, Pap ha Doctor euz an Ilis.
- DIRGUENER 12. — An Itron-Varia a druez.
- DISSADORN 13. — Sant Hermenejild, merzer.
- DISSUL 14. — Ar Sul bleuniou.

An Abostol hirio :

Va breudeur, ho pezet ar memes santimanchoù evel en doa Jesus-Christ pehini evel m'en devoa furm ha natur Doue (o veza Doue evel he Dad), ne ket ep guir eo en em lakea keit ha keit gant Doue he Dad; mes gouscoude so en em izeleat bete netra o kemeret furm eur servicher, oc'h en em renta henvel oc'h an dud, hag o kemeret kement a ranke da gaout evit beza anavezet evit den.

En em izeleat eo he unan oc'h en em renta sentus beteg ar maro, beteg ar maro euz ar groas. Setu perag Doue en deuz he zavet, hag en deus roet dezhan eun hano dreist an oll-hanoiou, evit d'ar hano a Jesus, ma stouo pep glin en Env, var an douar hag en ifern, ha ma c'hazavo pep teod ema hon Aotrou Jesus-Christ e gloar Doue he Dad.

(Lizer Sant Paul da gristenien Filip. II. 5.) G. M.

T O N G.

Setu ama eur pennad kentel, tennet euz eur gazeten c'halleg hanvet (Revue du Monde catholique). An histor a so guir, ervez ar scrifagner en deus-hi savet. Ne deus chenchet nemet an hanoiou.

E tu ar c'hevred-izel d'ar Frans, en eur guerig pe vilajennig savet oc'h diribis eur menez, ez oa eun tiad labourerien hag a jome eno a rum da rum a bep amzer. Morse n'oa doa kuiteat ar beg douar-ze. Beva a reant evel

ma c'hellent, ha biscoas n'oa doa bet ken sonch nemet da gaout eun tamig ed bennag en ho douar meinog.

Fransez Pastour a reat euz an hini a voa e pennan tieguezic-ze. Lezhanvet oa bet Pastour abalamour he dad en doa lezet gantha eun nebeut denvet evit heritach. En em gaout a rea euruz en he stad. He vap cossa, hanvet Anton, hag evit ober berroc'h, Tonig, eo a veze bemdez o tioual he zenvet.

Tonig a voa eur potrig displet ha dister, eur signac'h a botr. Gouscoude bep mintin, kerkent ha ma veze savet, ep ma vije red he c'hrognal, e lavare de mad d'he vam, e rede da graou he zenvet, ha lijer evel eun dremedal, e save gantho da guern an terguin hag ar meneziou, hag en em denne er flourennou a dost d'ar guez pin ha sapin a so dre eno. Pa en deveze cavet evit he zenvet eul leac'h hag a voa peuri enha, e c'hourveze dibreder e tal eur vezen, hag eno e rea sonjou ha ne deu marteze nemeur da vugale euz he oad. Ar vuez didor ha didre-veil-ze a lakea ar potric da ureal e cals traou. O chom evelse he unan an eil penn d'eguile euz an deiz, he speret a iea da veachi pell diouthan, he zonch a zave pell dreist ar c'herreg hag an tuchennou a voa en dro dezhan. C'hoant guelel bro a zave gantha nebeut ha nebeut.

Dioc'h an noz pa deue cloc'h ar barrez da zini an Angelus, ar potric denvet keaz a vele he oll ureou o vont e moguet. Ker coant ha tra e tenne he vonet gloan, hag ez ea d'an daoulin da lavaret he beden d'ar Verc'hez. Neuze e rea eur sutaden d'he gui, e conte he zenvet, hag ez ea laouen etrezeg ar gear. Pell araog digouezout e vele he vam var an treuzou oc'h he c'headal, ha neuze e rede d'he c'haout. Pa veze dent an tad euz ar pare, en em zestument oll en dro d'an tan, laouen hag e tres da varvaillat. Pa veze aozet coan gant ar vam, pep hini a astenne he scudel evit caout he lod euz ar iod mais great dre'n dour, eun tam bara segal hag eun tamig fourmach. Setu eno peurlieusa ho fred bemdez. Petra bennag n'oa ket druz ho c'heguin, n'oa devoa ket a naoun, den ne zonje d'eu em glem, ha dianaoudec braz e cafe dezho e vijent bet ma o divije manket da druga-recat Done goude ho fred.

Pa voa deut Tonic d'he zeg vloas, he dad a falvezas dezhan he denna euz ar vuez dibreder-ze, hag he gas gantha da labourat d'ar pare. Ar potrig a voa sentuz, ha n'en em gleme ket. Gouscoude pa vele he dad ar potric keaz drouglivet, pezennet ar c'hoez var he dal, e rea dezhan mont da eana dre an truez a guemere outhan, hag avechou e lavare d'he c'hreg: petra raimp-ni eus ar gvidroc'h-ze n'en deus ket muioc'h a nerz evit eur c'hoanen?

Red eo amzeri, a lavare ar vam. Bolontez vad en deuz ar potr. Dont a rai ners dezhan, ha Doue her sicouro.

Eun abardaesvez, e mis gouere, goude eun dervez tom ha loc'h, e voa en em zestumet coumoul bern var vern a zioc'h ar meneziou. Eur bar arne a velet ervad a vije.

Evit na vije ket tizet gant ar sourradou aveldro a c'hoez e corn ar meneziou, hag a ziscar avechou tud ha loenet, Tonig a deue d'ar gear buan mar gouie. Corventennou

a deue nag a zave ar boultren en ear en eur droidellat ken ma voa tenyalet an amzer gantho. Ar guez braz a sthaleff hag a blegue couls lavaret bete'n douar. Tonig a hon boas dioc'h harrou amzer evelse, rag er meneziou evel ar dra-ze aliez, cana a rea en eur vont. Setu hant eun taol o chom a za; eun dra bennag en deus evel; mouez eun den o houlen sicout; eun den doue bistran var da goll he vuez. Kerkent ar potrig kerkent a lez he zenvet, e goasc eur roc'h vras; he gui a lija d'ho tioual, hag e red da gas sicour d'an den a gledo o thevel. An noz a voa o tont; gouscoude e vel eun dra bennag oc'h hija, cripisset oc'h ar vein a zioc'h eun touf don. Eun den estren e tie beza, dianket er gheo jennou spontuz a zo oc'h ribl ar meneziou-ze. An aneur a dostea, hag an danjer a greske. Tonig a lakez he zioz vuez oc'h he c'hinou evit rei mui a ners d'he vuez, hag a griaz oc'h an den a voa eno chom a za d'he c'hortos. Neuze kel lijer hag eur gazel, ken ampar hag eur c'havre lam divar an eil mean var eguile beteg an thea chour dianket.

Hema a voa eur marc'hadour red, a iea dre ar vro da verza he varc'hadourez. Eur zam pounner a voa oc'h he guez hag a vite outhan na elle en em denna dre ar menezioù a zave ar reier-ze. Ar marc'hadour-ze a gave dezhan eun anac' mad he hent, mes dianket oa bet er gouscoude o tont o chom d'he ar meneziou.

Ar vuez a deue d'he emezhan, potrig; panefe c'hui doue bistran e vijent ket eat ac'hann; coezet e vijent en eun touf long bennag, ha va c'horf bruzunet a vije bet lonket varc'hadourez gant al labouset braz a c'hiournij dre ama. Guelel euz an dour a dost, ha creha a ra c'hoas va oll izili. » Ar marc'hadour a ket pell da zilaou ar marc'hadour oc'h he d'he guezat. Diredeg a reas da gaout he zenvet avon chomey maoutet e goasc ar roc'hel d'he c'hortos. Ar bea chour a deus var he lerc'h, hag e tigouesjont er vilaf abenn ma tenaz an arneu da ziscarga a gounnar. Ar labouerion vad a zigouemas laouen ar beachour; he lod en devoe euz ar pred bouet, ha zoken al loden vella, hag ive ar scaon tosta d'an tan. Pa en doa torret he naon, ha sec'het he zillad, e voue casset da gousket var ar guez raden fresc eleac'h ma edo en he raog, hanterog mad en he gousc, ar potrig en doa saveteet dezhan he vuez.

Abenn antronoz, ar bar arneu a ioa eanet; hoguen lezetien doa he roudou dre guement leac'h m'oa tremenet. Ar goaziou bihan a ioa deut da veza steriou, o doa toullat an douar ama, ruiellet mein vraz ahont, hag ober a reant c'hoaz eun trous braz o tisken divar ar menez hag o tremen dre voasc ar rec'hil. An hentchou a voa fuzet, trouc'het, caniennet. Fransez Pastour hag he c'herreg a bede ar beacher da jom c'hoaz, hag hema pasen doa guelel e pe stuz edo an hentchou, a voue gras gantho chom. A hent all, ar brud e voa eur marc'hadour e kar a voa en em skignet buan el lochenou divardro. Mintin mad, lochen Pastour a voa leun a verc'hed deut euz ar c'harter, mall gantho guelel petra voa e pacat ar beacher. An oll varc'hadourez a voue dispaket.

Bez'e voa a bep seurt, azaleg neud ha nadozion bete rubanou ha tamou seiz. Petra bennag ne voue ket caer iez ar vro, e rea gouscoude he guenvers brao avoalc'h hag e ber amzer e voa c'hoezet ha ronteat calz ar zac'h lien e pehini e lakea he venneien.

(Eur pennad all eur weach all) ed m'G. M.

KELEIER.

Lavaret a ver Archescopi Bourj., an Aotrou Prins Latour d' Auvergn, a vezo great Cardinal ep dale.

Ervez ar c'hazetennou, epad ar bloas 1866, ez eus maro e Frans da nebeuta ugent den hag o doa tremen cant vloas. Lavaret a ran da nebeuta, rag ar c'heliere ne ellont ket merca oad kement den coz a varf. Ar c'hossa so maro er rouantelez en doa eis vloaz ha cant. Er broiou estren ez eus c'hoaz hiniennou eat hirroc'h evit evelse. E Spagn e comzer euz a unan maro d'an oad a bemzec vloaz ha cant. En Antrich ez eus eun all da druyac'h ha cant. Hoguen ar c'hossa, credabl, so maro epad ar bloaz a zo eun den euz ar Mexic hag en doa trizeg vloaz ha c'huec'h ugent pa zeo eat euz ar bed-ma.

An ed, er sizun dremenet, so chomet e van van Gourinadeg so etre ar re a verz hag ar re a bren. Ar re a vers ne fell ket dezho disken hag ar breneien a fell dezho caout rabat. Evelse ez eus guerzet nebeut a ed. Ne deus nemet ar re so red dezho guerza hag o defe roet, ha n'eus nemet ar re so red dezho prena hag o defe prenet. C'hoas lod euz ar re-ma, evitho da gaout izom so chomet ep prena. Setu petra lavar Cazeten ar Menezioù.

Ar c'henta ebrel e tie beza bet an digor euz an Exposition vraz e Paris, hag ar zolanite evit ar prizion a vezo ar c'henta a vis gouere.

Ar c'holera a zalc'h ato en escopti Sant Bried. Ato e talc'h crog en eur barrez bennag.

Ar pemzeg a veurz ez eus diblisset adarre pemp missioner euz a di ar missionou diaveas bro. An Aotrou Gandy, a escopti Grenobl, evit Pondichery; an Aotrou Fauque, a escopti Gap, evit Siam; an Aotrou Desbons, euz a Vacon, evit ar Malaisi; an Aotrou Murcier, euz a Lyon, hag an Aotrou Bonin euz a Autun, evit Saigon.

AN DIAOUL O TUTA. — Pa za ar feiz euz eur c'harter, pa bella tud eur c'harter dioc'h Doue, levezon ha gallout an droug speret a gresc en ho zouez. Evelse hini e tigouez traou evel a zigoueze guechall pa brezeguet ar feiz d'ar baianet. An droug-speret, red deshan tec'het araog sclerijen an Aviel, a rea freuz avechou araog en em denna. Setu ama eun histor tennet euz eur gazeten a Rom, digouezet e Loret n'eus ket pell, ha var behin pephini a zonjo evel ma caro. Eul lizer eo a scrifer euz a Loret da rener unan a gazetennou Rom.

Ama ez eus digouezet eun dra hag a laca souezet an oll. Meur a vil den o deuz he velet ; anez e vije poan oc'h he gridi. Var dachen ar c'hallaouet, e Loret, ez euz eur goff, (eur marichal) hag en deuz ar brud da veza dispac'her. Eun dervez ma edo o labourat gant he zaou vap hag eur mevel, setu hen o velet o coeza en dro dezhan glao mein vian. Ar glao-ze ne alle ket coeza na dioc'h ar plench na dioc'h coatach an doen, mes ne glascas ket gouzout hirroc'h. C'hoeza a ra tan ; lacat a ra eur varren honarn en tan, ha pa voa ruz he laca var an anneau. Kerkent ha ma en doa savet he vreae'h hag he vorzol evit skei var an tom, an anneau, evit-hi da veza pounner braz ha stag mad, a eil-gostezaz, hag eur pez teolen a goezas var ar fourniez hag a lazaz an tan. Epad ma chome sebezet, hen hag he vugale, e clevaz eur vouez o lavaret : *ean da labourat-ta!* Va den a zonjas dezhan e voa eno unan bennag euz he vignonet en em laket da ober pez dezhan ; mes ne voa ket. Unan euz ar botred a velaz he dog savet divar he benn, ha strinket oc'h guinou an tad, hag ar vouez a lavaraz : *Deus ganen, hag e vezi mad.* Ar goff a grogaz an nec'h enhan, gouscoude e c'houleunnas oc'h ar vouez : *Piou oc'h-hu, ha pelec'h e fell deoc'h-hu va c'has?* Ar vouez a respontas : *Eur speret oun, hag arc'hant a roin dit.* Ar goff a reaz eur zao d'he ziouscoas ; ne gredas da netra, hag e fellas dezhan en em lacat adarre da labourat. Hoguen ne alle ober netra. Kerkent ha m'en deveze c'hoezet an tan, e e veze mouget adarre, ha ne eanet da hegal outhan e pep guiz.

Epad pemzeg dez e chomaz ar bed evelse. Va den dioc'h eun tu en doa aoun ; dioc'h eun tu all en doa c'hoant da gaout arc'hant, hag e tifenne ouz he vugale lavaret guer euz ar pez a dremene. Hoguen pa velas ne deue ket a arc'hant dezhan, e chome he labour a za, ha ne deue mui an dud d'he c'hofel, ez eas droug enha a enep ar speret. Hema a c'houc'hemennas dezhan mont he unan, en noz, eur c'hardeur bale dioc'h Loret, en eul leac'h a verke dezhan, cleac'h ma zoa calz a arc'hant. *Va unan? ne din ket eme ar goff; ma ve re all ganen c'hoas, ne lavaraz ket. — Da zistrei e vezo re all ganeez, eme ar vouez, rag antercant omp. — Mad, ne din ket, eme ar goff, ne fell ket din mont. Va list da labourat. Me so quest da c'hounit va bara.*

Evel na baouez ket ar speret outhan, e sonjas coms a guementse d'he c'hreg ha da eur mignon dezhan. He c'hreg a reas cals soujou pa glevas ; christenez vad eo. He vignon en em lakeas da c'hoarzin, hag a lavaraz oa eun ure en devoa great. Fallout a reas dezhan dont he unan d'ar c'hovel da velet petra voa. O veza deut e c'houc'hemennas d'ar speret meuli Doue. Neuze e voue clevet eun niver braz a voueziou o c'hrosmolat hag o crial evel tud en egar.

— *An diaoul out-ta?* eme ar mignon.

— *Du oun,* eme ar vouez.

Etretant ar c'hreg a voa bet o caout he c'honfessour. Hema, ep douguen barnediguet ebet, a lavaraz guella tra en doa ar goff da ober oa en em lacat e gras Doue

dre eur goffession vad, ha neuze e vije dizanjer. Ar goff a huellaz an ali-mad-ze. Tremen a reaz eis dez o lacat he goustians e stad vad dre eur guir goffession hag eur guir glac'har d'he bec'hejou, ha neuze ar beac'h-a voa var he ene en em gavas scanveet cals.

Gouscoude ar brud o veza eat dre guær, an oll a felle dezho dont d'ar c'hovel da glevet ar vouez ha da velet an traou burzuduz a dremene eno. Avechou e velet ar reiz govel strinket oc'h ar mogueriou, avechou e coueze peziou mein gant eun trous bras ne vouiet ket euz a beleac'h. Ar re so carguet euz ar polis a deuaz ive di, a furchaz ar c'hovel azaleg an doen beteg al leur-zi, ha soken an tiez tro var dro, a freuzas zoken lod euz ar mogueriou, ep gallout dizelei netra. Neuze an dud difeiz euz ar vro a zifennas comz a guementse dindan boan a vâro. Hoguen, penaus staga ho zeod da guement all a dud? Evit diskuez he botr mad, eun dispac'her difeiz a fellas dezhan mont he unan er c'hovel ha serra an or varnezhan. Mes ne voue ket pell na deuaz er meaz en eur iudal. Eur picol mean a ioa bet stlapet oc'h he guein hag en doa he ziscaret ; ha pelloc'h den n'en doa c'hoant da c'hoarzin na da ober goap.

Erfin, eun dervez, d'ar iaou, ar speret a deuaz adarre da glasc touelli ar goff o lavaret e roje madou dezhan. Teleur a reaz a stlabez eun nebeut moniz var an dol, hag e lavaraz dezhan ma carje dont antronoz he unan da zigueri ar c'hovel, e roje dezhan eur zac'had arc'hant. Antronoz ar goff a deuas gant he zaou vap hag he vevel. Ar speret, counnar enha, a reaz eur safar scrijuz, hag a stlapaz eur mean oc'h he benn. Ar goff neuze a zerraz dor ar c'hovel, a ieas d'he di hag en em lakeaz en he vele. Dre ali ar medecin e lakeas killaouennet, (goade-rezet) eleac'h ma voa bet scoet, ha ne fellas dezhan mui mont d'ar c'hovel milliguët-se. Gourc'hemenn a reas zoken d'he vipien mont da brenna mad dor ha prenecher ar c'hovel-ze, ha dioual na dajent ken enhi. Eur vanden-tud a ieas gantho, hag e veljont ar reiz govel taolet ama hag ahont, ar veguin discaret, hag al leur-zi dispennet. Abaoue eo chomet serret ar c'hovel.

Petra da zonjal var guementse nemet e permet avechou an Aotrou Doue d'an droug-speret diskuez he fallagriez hag he gounnar evit rei kentel d'an dud?

G. M.

PRIZ AN EUD.

KEMPER. — 30 Meurs.		PONT-NABAT — 28 Meurs.	
<i>Priz ar c'hant liour.</i>		<i>Priz ar c'hant liour.</i>	
Guinis....	44 lur, 76 c.	Guinis....	45 lur, 58 c.
Segal.....	9 lur, 44 c.	Segal.....	9 lur, 58 c.
Eiz.....	9 lur, 70 c.	Eiz.....	9 lur, 38 c.
Ed-du....	6 lur, 87 c.	Ed-du....	7 lur, 29 c.
Kerc'h....	9 lur, 09 c.	Kerc'h....	9 lur, 75 c.
Avalou-douar	4 lur, 50 c.	Avalou-douar	4 lur, 25 c.

Ar Gerant: AR. DE KERANGAL.

Kemper, moulet gand AR. DE KERANGAL, Moullet an Escopti.

FEIZ HA BREIZ,

KELOU A BEP BRO, HA KENTELIOU VAR BEP TRA,

DIGASSET BEP SUL

Da guement Christen a goms ar brezounee.

Eun Abonnamant d'ar Gazeten a goust :

Evit eur bloas.....	DAOU SGOUET.
Evit c'huec'h miz.....	EUR SGOUET.
Evit tri miz.....	C'HUEC'H REAL.
Eur gazeten ebken.....	DAOU VENNEG.

Ar bacamant a dle beza great araog caout ar gazeten.

ALIOU.

Ar scrijou a ve c'hoant da lacat er gazeten a dleer da adressi oll d'an Aotrou MORVAN, Beleg e Kemper.

Ar paeamanchou a dleer da adressi d'an Aotrou SALAUN, ebken. An abonnamant a guemerer e ti an Aotrou SALAUN, librer, ru Kereon, e Kemper.

KEMPER, 13 Ebril 1867.

Mont var araog evit eur c'hristen, a lavare Pii nao en dez'all, a so pignat a vertuz e vertus beteg ar zantelez. Evelse eur c'hristen a ia var araog pa anavez guelloc'h he zoveniou, ha pa ho gra aketussoc'h : pa ro guelloc'h skuter d'he nessa ; pa deu he galon da veza entanet muioc'h dre garantez Doue ; pa zeo douguetoc'h da ober vad ; pa seuil muioc'h a vad oberou var he bent. Euntiegeuz a iavar araog pazalc'her guelloc'h urzenhan, pa zeo enha peptra guelloc'h reglet ; pa veler an tad liagar yamoc'hiorren guelloc'h ho bugale, o rei dezho guelloc'h descadurez, eun descadurez muioc'h christen ; pa veler ar vugale sentussoc'h, o caout muioc'h a respet hag a garantez evit ho zad hag ho mam. Eur c'harter, eur vro a ia var araog pa veler ar feiz o luguerni enha muioc'h, pa veler guelloc'h unvaniez etonez an amezeien, nebeutoc'h a dromplerez er foariou ha marc'hajou ; ar suliou hag ar goueliou guelloc'h miret, an dud izomec muioc'h sicouret. Da lavaret eo, en eur guer, an den, an dig, tud, ar c'harteriad tud a viro guella lezen Doue hag hini an iliz eo a ielo ive muia var araog.

Ha red eo sonjal ne vir ket kementse oc'h eur guir gristen da veza ker gouezieg hag ar re all, da anaout couls ha den an traou ijinus savet a nevez zo ha gant pere e rer kement a drouz hag a fougue abalamour n'oant ket anavezet gant hon tadou coz. Kementse ne viro ket oc'h eun tieg da anaout guelloc'h he zouarou, da c'houzout pe seurt labourou a dle da ober ha pe seurt tresp a dle da lacat enho, ha penaus mania ar benviachou ijinuz a ell scañvat ha difreat he labour. Kementse ne viro ket oc'h tud eur c'harter da ober guelloc'h, caletoc'h, plenoc'h, essoc'h hentchou, da zavel guelloc'h loenet, da rei talvoudéguez d'an douarou-ze pere guech all ne dalient netra, pe couls lavaret netra.

Evit mont var araog avad evel a fell da hiniennou o lezel a gostez lezen Doue ha lezen an iliz evit heuilla epken he benn he unan hag he froudennou var digarez

ma creder caout eun tam gouezieguez bennag, kementse a so kentoc'h dont var adren. An den a fell dezhan en em ren evelse ne ra nemet en em zalla, a vale en denvilijen hag a goezo soudeñ var he benn ; an tiegeuz renet evelse ne oufe beza enha nemet dizurs, hag ar c'harter ne oufe ket miret da gaout freuz ha dispac'h. En eur guer ne dear var araog nemet e kement ha ma teuer da veza guelloc'h. Anez e coezer en dalentez hag e tener da veza evel pa vet diskiant. Doue a permet-se evit discar an dud faeuz a fell dezho tremen ep than. Ne fell ket dezho azeuli Doue, hag ec'h azeulont tud ha n'o deus great morse nemet droug. Ne fell ket dezho euz ar zent nag euz ho skeudennou, hag e savint skeudennou da dud hag a zo meñ comz anezho. Ne fell ket dezho daoulina, stouet dirag Doue, hag e taoulinint, hag e stouint d'an douar dirag tud hag ho bresso dindan ho zreid, dirag tud ken diskiant hag hi, ker brein hag hi dre ho dizurziou. Hoguen kementse a dra zur ne ket mont var araog, ne ket pignat eo, mes disken calz izeloc'h eguet ar re a ve c'hoant da ober lae varnezho.

Rom. — Ervez ar c'heleier a Rom, emae a brez o pourchas pep tra er guær vraz-ze evit ar goueliou caer a dle beza eno e fin miz even. Hon tad santel ar Pap en deus goulenet an oll gamprou a eller da zouveret er c'honenchou evit loja enho an eskibien a ielo di evit an trivac'h cantvet bloaz abaoue merzerinti sant Per. A bep seurt micherourien so o labourat en dra c'hellont evit pourchas pep tra.

D'an nao varnuguent a even, ar solanite a dle beza en ilis sant Per. Antronoz, ar Pap a gano he unan an oferen en ilis sant Paul er meaz a guær. Epad an eivset e talc'ho bemdez chapel en ilis sant Ian Latran. D'ar seiz a vis gouere e vezo canonizet an den eurus Josaphat hag ar servicherien all da Zoue a so bet hano anezho el lizer en deus scifet ar Pap d'an eskibien. An oll eskibien a vezo e Rom neuze euz an oll bed christen couls hag eskibien an Itali a vezo er solanite-ze. D'ar pevarzeg a viz gouere

e vezo discleriet euruz an daou c'hant pemp merzer euz ar Japon.

Rom a guemer eur zourci ar brassa euz ar zoudardet so eat da zervicha ar Pap, Pep tra a rer evit ho zicour da ellout ober ho zilvidiguez er vicher o deus kemeret. Tiez a retred so digor evitho d'an derveziou araog ar goueliou bras.

Lavaret a rer en deus sonch hon tad santel da henvel ep dale cardinalet nevez evit ho zevel d'an niver custom araog goueliou miz even.

Ar c'hardinal Antonelli ha meur a hini all o deus kinniguet ho faleziou d'hon tad santel ar Pap evit diguemeret enho an eskeb a ielo da Rom.

E Rom ez eus brema digor retrejou evit ar zouavet en em bourchas da ober ho fasc. E tri leac'h e rer ar retrejou-ze evit ma c'hell pep rum cleve prezeg comzou Doue en he iez.

Rejimant ar chasseerien en deus great he retred. Var dro mil anezho, ho c'holonel en ho feun, o deus communiet gant an devosion ar skueriusa. E Rom, a drugare Doue, n'eus ket a vez oc'h ober he zever; mez a ve kentoc'h o chom ep he ober. Gouel sant Joseph zo bet great gant ar brassa solanite. Ar gristenien vad o deus discoezet eun devosion dispar. Guelet a reat o doa c'hoant da zic'haoui pried santel ar Verc'hez evit an dizurziou a rea an dud difeiz abalamour da zaou zispac'her braz a zong an hano caer a Joseph.

An eskibien a so bet hanvet el leac'hiou ma vanke en Itali, a so bet great dezho eun diguemer ar c'haera gant christenien ho escoptiou. Gouscoude en em gavont en eur stad trist meurbet. Ho danvez so bet lamet digantho, hag en em gavont en eun dienez vras. Ar pez a ra muia poan dezho eo ne ellont ket sicour an dud izomeg evel ma reant diaraog, hag eo red dezho ober ar scouarn vouzar oc'h mouez ar beorien a deu da c'houlen an aluzen digantho, petra bennag ma zeuz hiniennou hag o deus guerezet ho lienach hag ho arrebeuri evit gallout beva.

NAONET. — E Naonet ez eus nevez maro eur breur euz ar scolachou christen hag a verit, eme eur gazeten euz ar gear-ze, e ve comzet anezhan. He dad a ioa mestr scol ha christen mad. He studi a reaz e Paris gant meuleudi, ha goudeze ez eas da zoudard. Da sicour ar Pologn e voue casset. Evel ma zoa eun den gouezieg ha caloneg, ne voue ket pell evit sevel bete beza cabiten canolier. Bez'en devoue he lod euz a veur a emgann, hag e voue erfin kemeret gant ar gozaket, ha condaonet d'an harlu e gouelec'hiou ar Siberi. Ar gouarner a anavezaz ep dale speret ha calon he brizonier, hag hen lakeas da ober scol d'he vugale. Divezatoc'h e teuz a benn da lacat impalaer ar Russi d'he lezel da zistrei d'he vro. Ar c'habiten Martin a zistroaz eta e Frans goude beza bet pemp bloaz en harlu, ha dioc'htu e falvezas dezhan kuitat ar bet, hag ez eas etouez breudeur ar scolachou christen, evit, er stad dister-ze, lacat he oll vouezieguez

da zeski d'ar vugale anaout ha caret Doue. Goude beza bet oc'h ober scol e Chalon, e Paris, e Tour, eo deut d'an Naonet eleac'h ma zeo deut Doue d'he c'hervel.

Eun escop protestant a iliz Bro-Zaoz a rente, n'eus ket pell, eun testeni caer d'al leanezet a ra scol d'ar vugale er Bengal.

« Eur vez eo evidomp, eme ar protestant-ze, e ve casset eun niver braz euz hor merc'hed da zevel d'ar c'houchou catolic. Eur vez eo cleve ar gueren o lavaret e cassont ho bugale d'ar c'houchou-ze abalamour ne gavont e nep leac'h evitho na couls descadurez na couls marc'had. Beachet em eus cals, hag e pep leac'h em eus cleve lacat an descadurez roet er c'houchou-ze en tu all d'an hini a roomp-ni. E pep leac'h em eus cleve lavaret e rea al leanezet-ze ho dever a greis calon, e kemerent ar brassa sourci euz ar vugale; ha ne gredent ober nemet ho dever o lacat ho oll boan da zevel ha da guelen mad ar vugale laket en ho c'harg. » Setu ar pez a lavar ar memes gazeten euz an Naonet.

Hoguen, ne deo ket er Bengal epken e verit al leanezet ar veuleudi-ze. E Frans, er missionou, en oll broiou, e reont ar pez a reont eno, e reont ho oll gallout evit rei eun descadurez christen d'ar vugale.

ALBI. — En derveziou diveza euz ar bloas 1866, diou leanez euz ar conception didach, euz a Gastr, nevez eat d'ar Senegal, a varve gant ar c'hlenvejou a c'hounezet dioc'h an ear fall so er c'harter-ze. Kerkent an oll o doa c'hoant da vont en ho leac'h. Ranket ez eus choaz, hag ar pemp varnugent a c'huevrer ez eus savet en eul lestr, e Bourdel, peder leanez all evit mont d'ar Senegal da rei ive ho buez, mar bez red, evel an diou guenta.

E Brozaoz e tistro ato dalc'h mad hiniennou euz ar re zesket a oc'h an ilis catolic. An tad Newman en deus recevet er guir relijion eun den a zalc'h renc en ilis Brozaoz, ha daou scolaer euz a di ar missionou protestant, a Gantorbery.

COCHINCHIN. — Goad eur merzer nevez en deus ruziet douar Camboj. An tad Barreau, evit beza ma zoa dispac'h er vro-ze ha ma c'heskinet ar visionerien, ne voa ket falvezet dezhan tec'het. Chomet oa en he vision. An dispac'herien o deuz he laz. An unnevet missioner eo a varf merzer er vro-ze.

SANT-BRIEC. — Breuriez ar Feiz a ia caer meurbet en escopti Sant-Briec. An Aotrou Hamet, o renta he gontchou d'an Aotrou Escop, a lavar en deus gallet cas da Pariz, evit Breuriez ar Feiz epad ar bloas diveza, tremen cant mil lur.

G. M.

HISTOR ZANTEL

(DEKVED PENNAD).

GOULIOU ANN EJIPT.

EXOD IX.

Pemped gouli. — Ar Vosen var al Loened.

Ann Aotrou Doue a lavaraz da Voizes : It da gavout Pharaon enn he balez, ha livirit d'ezhan : Chetu petra a lavar ann Aotrou, Doue ann Hebreed : List va bobl da vont evit ma rei eur zakrifis d'in. Ma na zentit ket ar veach-ma c'hoaz, ha ma ho dalc'hit, va dourn a vezo var ho parkeier. Eur vosen c'hrisiaz meurbed a gouezo var ho kezek, var hoc'h ezen, var ho kanvaled, var ho saoud ha var ho tenved. Hag ann Aotrou a lakaio c'hoaz eur c'henn burzuduz etre madou Israel ha madou ann Ejiptianed; ne varvo netra euz ar pez a biauou ouc'h bugale Israel. Ann Aotrou en deuz merket ann amzer; varc'hoaz e seveno Doue var ann douar-ma ar pez en denz lavaret.

Antronoz eta holl loened ann Ejiptianed a varvaz, mes euz loened bugale Israel ne varvaz nikun.

Pharaon a gassaz da velout; ha ne oa maro netra euz ar pez a oa e kerz bugale Israel. Mes kaloun Pharaon a galedaz, ha ne lezaz ket ar bobl da vont kuit.

C'houchved gouli. — C'houcheghellou liskidik var groc'hen ann dud.

Hag ann Aotrou a lavaraz da Voizes ha da Aaron : Kemerit leiz ho taouarn, ludu euz ann oaled, ha ra daol. Moizes al ludu-ze enn ear dirag Pharaon. Ha ra gouezo ar baultren-ze var holl zouar ann Ejipt, hag e savet eduliou lin-brein ha c'houcheghellou liskidik var ar bobl ha var al loened, dre zouar ann Ejipt.

Hag e kemerjont ludu euz ann oaled, hag ez ejont dirag Pharaon; ha Moizes a daolaz al ludu enn ear; hag e savaz gouliou linck ha c'houcheghellou liskidik var ann dud ha var al loened. Hag ar vagicianed ho-unan na gredent ket ment dirag Moizes dre'n abeg d'ar gouliou a oa enn-ho evel enn dud all dre holl zouar ann Ejipt.

Hag ann Aotrou a galedaz kaloun Pharaon, ha ne zelaouaz ket Moizes hag Aaron, evel ma en devoa ann Aotrou hen diskleriet da Voizes.

Seizved gouli. — Ar grizill.

Ann Aotrou Doue a lavaraz adarre da Voizes : Savit mintin, hag it hardiz dirag Pharaon, ha livirit d'ezhan : Chetu petra a lavar ann Aotrou, Doue ann Hebreed : List va bobl da vont, evit ma rei eur zakrifis d'in. Rak eun dro-ma e skoinn gant va holl voaligner var ho kaloun, ha var ho pobl; evit ma ouiot n'euz ket par d'in var ar bed holl. Ia, astenn a ninn va douru, ha skei a ninn var n-hoc'h ha var ho pobl ker goaz hag ar vosen, ha sammet a vefac'h divar ann douar; mes ho lekeat am euz ar pez ma'z oc'h hag ho kenderc'hel a rann, evit ma tiskouezinn enn-hoc'h va holl-c'halloud, ha ma vezo

brudet va hano dre ar bed holl. Ha c'hoaz e talc'hit-hu va bobl, ha na fell ket d'hoc'h hel leuskel da vont kuit? Mad! varc'hoaz, d'ann heur-ma enz ann deiz, e likiinn da goueza eur grizill spountuz evel n'euz bet biskoaz enn Ejipt abaoe ma'z euz tud er vro-ma. En em ghemerit eta, ha dastumit ho loeded ha kemend mad hoc'h euz var ar meaz; rak ann dud hag al loened ha kement tra a choumo er meaz dindan ar grizill, a varvo.

Ar re euz a zervicherien Pharaon a zonzaz komz ann Aotrou Doue, a reaz dastum ho zud hag ho loened enn tiez. Mes ar re ne rejont stad ebed euz a gomzou Doue, a lezaz ho zervicherien hag ho loened er parkou, hag e oent laz.

Ha Doue a lavaraz da Voizes; Astennit ho tourn var zu ann env, evit ma kouezo grizill e holl zouar ann Ejipt, var an dud ha var al loened, ha var holl c'head ar mezou.

Ha Moizes a astennaz he voalen etrezeg ann env, hag ann Aotrou a zigassaz kurun, ha grizill, ha luc'hed o redeg var ar vro euz ann eil penn d'eghuile. Ar grizill hag ann tan-red a foete ann eil e mesk eghile; hag ar gronnou grizill a oa ker braz, ne oue guelet biskoaz kement-all e holl vro ann Ejipt abaoe ma oa tud o choum eun-hi. Hag ar grizill a lazaz e holl zouar ann Ejipt kement tra a oa er mezou, adaleg ann dud beteg al loened. Ar grizill a lazaz ivez holl c'head ar mezou, hag a vrevaz ar guez e pep leac'h. Nemet e douar Jessen, eleac'h ma oa bugale Israel o choum, eno ne gouezaz ket a c'hrizill.

Ha Pharaon a gassaz da c'hervel Moizes hag Aaron, hag a lavaraz d'ezho : Pec'het am euz ar veach-ma c'hoaz; ann Aotrou a zo just, ha me ia va bobl a zo tud dizouj e kenver Doue. Pedit ann Aotrou, evit ma ehano ar gurun braz-se hag ar grizill, ha ma ho lezinn da vont kuit, ha na choumot mui ama pelloc'h.

Moizes a respontaz : Pa vezinn eat er meaz euz ho kear, me a zavo va daouarn etrezeg ann Aotrou, hag ar c'hurunou a ehano, ha n'e vezo ken a c'hrizill, evit ma ouiot eo ar bed-ma d'ann Aotrou. Hoghen gouzout a rann na zoujit ket c'hoaz ann Aotrou Doue, na c'houi nag ho servicherien.

Moizes o veza eat a zirag Pharaon, hag er meaz euz ar ghear, a zavaz he zaouarn etrezeg ann Aotrou, hag ec'h ehanaz ar gurun hag ar grizill. Neuz e oe guelet ar reuz a oa great; al lin hag ann heiz a oa kollet, dre ma oa glaz ann heiz, ha ma oa al lin oc'h ober he zeliou. Mes ar guiniz hag ann edou all n'ho doe ket a zrouk, dre ma oant divezatoc'h. Ha Pharaon o velout e oa ehanet ar glaz, ar grizill hag ar c'hurunou, a lekeaz pec'hed var bec'hed. He galoun hag hini he zervicherien a bounneraaz, a galedaz goaz eghet biskoaz, ha n'e lezaz ket bugale Israel da vont kuit, evel m'en devoa gourc'hennet ann Aotrou d'ezhan dre c'henou Moizes.

H.

BUEZ SANT PAUL,

(Trede pennad).

Sant Paul o veza eta erruet e *Kernic, Lochrist-an-Izelved*, a gredaz beza cavet al leac'h merket d'ez-han gand Doue. Lavaret a reaz d'he' zaouzec beleg, mont pep hini da glask dre eno eul leac'h a dost evit sevel eul lochennic da dremen en-hi he vuez er beden hag er binijen; ha setu kerkent an trizec missionner o tilezel an eil eguile evit mont da glask eul leac'h a gostez da ober ho ermitach. Unan euz ar veleien-ze hanvet Joevin, o veza cavet e kichennic, eun draoien ar vrava, a savaz en-hi he dammic ti mounded: mez beza en devoa eun amezec ar falla: an amezec-ze oa eun ejen-gouez, ne voa ket evit dont a benn da bellât, caer en devoa ober brezel d'ez-han. P'en dije great Joevin eun tam labour benag endro de gabanen, an ejen gouez a deue, ha gand he guerniel hen freuze pen-da-ben. An ermit zoken ne voa ket re e savete; setu perac ez a da gaout Paul evit rei d'ez-han da anaont ar pez a hoarveze. Paul hen, leun a fisians e Doue, a za var al leac'h hag a ro urs d'an aneval gouez da vont en he dro. Ahoude vech an ejen-ze n'eo bet gouelet mui dre eno. Ar sant a lavaraz neuze d'he ghen-vreur chench ermitach ganthan, hag o veza jommet eno e-nuan, e savaz eun orator hanvet hoaz hirio *Lam-Paul*!

Ar Sant a rene eno eur vuez ar santella: en em blijout a rea calz, dre ma crede d'ez-han beza e leac'h ma falveze da Zone e vije. Mez an heur a ean ne voa ket hoaz scoet evit-han. An eal a ioa bet diou vech dija o tigue-men d'ez-han chench bro, a deuz adare he vetek, hag a lavaraz d'ez-han senti a nevez euz Doue, mont da gaout an hini a c'houarne ar vro, hag hennez a ziskueje d'ez-han eul leac'h hag a vije an diveza euz he vuez. Ha setu antronoz, Paul o veza destumet he ghen-vreudeur missionnerien, oc'h en em lacat en hent evit mont da glask ar gouarnour-ze. An amzer a ioa tom-braz hag ar hale a ioa diez meurbed. Ar beachourrien a ioa skuiz gand an hent ha dare gand an naon; ouспен pifidet e voanf gand ar sec'hed. Erruont a rejont en eul leac'h hanvet ar Vein, var ribin ar mor. Eno e rejont eun diskuis; ha goude ez cont tro-var-dro da glask eur feunteun; mez caer o doa furcha, ne gelfont nikun! Marvet e vijent holl eno gand ar sec'hed, peneffe er zant, dre drez eul he ghen-vreudeur, a reaz dre he bedennou sevel teir feunteun var all leac'h. M'ar boa braz araok carantez ar visionnerien evid ar zant, e teuz hoaz neuze da veza brassoc'h. Ar burzud-ze ho lekeaz da drucarecat Doue, a ro d'an holl ar maro pe ar vuez, ervez ma plij ganthan.

Etre m'edont holl azezet oc'h ober eun ean e kichen an teir goachad zour a rede euz an teir feunteun burzuduz, e tigouezaz d'ez-ho goelat eur pastor-denved pe eur messaer o lacat en eur vont eur vandennad vad a chatal da beuri. Goulen a rejont diganthen hag hen a anaie mad ar vro, ha pez hano en doa he vestr. Ar pastor-man a

ioa unan a servicherrien ar gouarnour Withur, hag evid eun den divar ar mæz, a deuz da gomz outho en eun doare amiabl ha dudiu. Oc'h en em drei euz S. Paul e lavaraz: « Va mestr, emez-han, a zo he hano Withur, « laket gand Childebert, roue a Frans, da houarn ar « horn douar-man. Ne man ket e chom pell ahan, ha « ma fell d'e-hoc'h mont he vetek; no peuz nemed « dont ganen, ha me en em gark d'ho cas beteg he ba- « lez; goude-ze, me a ziskuezo d'e-hoc'h eul leac'h « distro, ervez m'ho peuz goulennet bremaic diganen. « Va mestr a zo eun den euz ar re vella, haga roio d'e- « hoc'h dighemer-mad. Mez an noz a dosta, va ein a « gomans ober fae var al leton: an heol a izella: buan- « neomp eta hor c'hammajou vit ma c'herruimp araok « an noz. »

S. Paul a guemeraz ar pastor-ze evel eun eal digasse d'ez-han euz an Env evid hen hench: Mont a reaz ganthan eta beteg eur gheric vian tost d'ar mor hag a zoug hirio he hano, da lavaret eo, Castel-Paul. Ar gherman anavezet aveac'h neuze gand an divroidi, a zo deut da veza eul leac'h brudet meurbed abalamour d'he iliz cathedral, unan euz ar vrava ilizou, hag abalamour da eun tour caer ha dantelezet a zo en-hi. Ne barlantan ket euz he scolach, rag m'az-eo anavezet gand an holl evid an descadurez vad a guever en-han. Hoguen, setu ar gher m'ac'h errue en-hi S. Paul. Araok mont e kear Paul a deu d'ez-han tremen eur feunteun: dont a ra da rei he vennos d'ez-hi, hag an dour euz ar feunteun-ze e deuz great burzudou ken braz ma ve diez ho niveri. — Castel-Paul, er mare ma n'em gavaz ar sant-man a ioa nebeut a dra: Ne velet a bep tu nemed tiez goulo, tiez discaret en ho foull; ar ieot a zave var ar ruiou. Ar pez a ioa penn-caoz da ghemment-ze, eo ar Saxoned a ioa nevez tremenet dre eno. Ar rema dre ar brezel o doa casset Castel da netra, coulz lavaret. Ahano Sant Paul a zeaz d'eun enezen, hanvet enez Vaz, e leac'h m'edo palez ar gouarnour Withur. An tosta douar d'an enezen-man eo Rosco ha Santec. Beza eman var dro eul leo er mor: Darn a fell d'ez-ho lavaret, eo bet gouech-hall Baz stag euz an douar, hag ez eo bet distaguet dre eur reveurzi vraz. P'ezeo guir kement-ze, pe n'ez eo ket, da viana ec'h elleur garanti, edo enezen pa n'em gavaz Paul en-hi.

BODEUR.

AN DILONTEGEZ.

(TREDE PENNAD.)

D'eomp brema da harpa ar pez hon euz lavaret gand eunn nebeud exemplou bennag pere a ziskuezo ivez ann dilec'hiou noazuz euz ann tech mezuz-ma oc'h pehini e vrezelkaomp:

Eur charretour euz ar Finister o vont eunn deiz enn hent gand he garr a arruaz gand unan euz he genseurte pehini a charée eur pez braz a vin-tann (e gallek, eaudé-vie). Hema a ginnigaz d'ezhan eur banne, ar pez a gemeraz. Paotr ar guin-tann a zistankaz unan euz ann toullou-hibil a oa e kichen ar stanv pe ar bond, a lekeaz

charretour, hag a reaz d'ar charretour eva dre eno. M'ar reaz e guirionez, hag a-benn eunn nebeud momedouze oa ker mezo, na fellaz ket diskenn he-unan euz ar c'harr. Hogeneurd hel lekeaz da c'hourveza var ann douar hag hel lekeaz eno. Den ebed na zigouezaz d'ezhan an den he ann hent-ze, hag antronoz vintin e ouestkavet ar reuzudik ma maro mik. He vreg paour hag he ger d'ezhoz d'her anaout, hag ho doe ar glachan da velet he vesia hep lid e bed.

Exempl all: Eunn den iaouank euz a gostez Sant-Brice a oa soudard e amzer Napoleon kenta. Ann den iaouank ma a behini ann hano badiziant a oa Lorans, en doa kemeret ann tech da eva. Eunn devez ma edo he rejmant e Savone en Itali, e peleac'h emedo o chom eun eunn iliz, (amzer ar revolution vraz a oa neuze) Lorans o listret d'he lojeiz mezo mik a arruaz gand he gouronall pehini a fellaz d'ezhan he gelenn. Lorans a skoaz gand han gand eur vaz en doa enn he zorn. Dre chans ha oa d'ar mare-ze nemet-ho ho daou dindan porched ann iliz. Ar c'houronall a c'halvaz daou zen, hag a lekeaz kas Lorans d'he blas. Ar reuzudik, daoust ma oa mezo, na zaleaz ket da anaout ar grevusded euz ar c'haz e pehini e oa en em lekeat: gouzout a rea ma vije kaset divagant e conseil brezel, e vije barnet d'ar maro. E breiz a reaz eunn nosvez diez aoualc'h. Ar c'houronall pehini a oa eunn den mad, ha pehini a garie Lorans da ma oa eunn den a galoun, a lekeaz he c'hervel d'he gant antronoz vintin, hag a lavaraz d'ezhan: « Reuzudik, gouzout a rez e pe gaz out en em lekeat!

— Ma ma c'houronall; gouzout a rann em euz meritet ar maro, gant d'in m'evl mar kirit. Ar pez a ra nec'h d'in, eo m'evl dre eur maro mezuz. — Mad! eme ar c'houronall d'ezhan, me fell d'in da bardoni gand daou ziviz: anse hella, ma h' kement ha ma helli evit lakaat da laz ar c'henta soudard; ann eil, ma na vez ket laz, ma ri d'in la c'her, dirak Doue, na evi bikenn evach mezuze bed. Lorans a respontaz: « Kouronall, kemer an ann ho laou ziviz gand anaoudegez-vad, hag e roann d'e-hoc'h ma ger e vezint sevenet. » Mad, eme ar c'houronall, la c'her eo bet test euz ar pez ec'h euz great, kerz kuit, ha d'ezhoz d'ezhoz. » Ar c'houronall a lavaraz da Lorans goude ar stourm pe emgann kenta. Ar c'henta diviz a zo bet sevenet mad; ma n'oud ket maro, ne ket dre da laot eo; brema, ann eil diviz eo a zo ret d'id da seveni. He-ma, Lorans en deuz he sevenet mad ive, ha setu ama eunn dra a behini oann bet test: Lorans, deut da bemp bloaz ha pevar-ugent, en doe eur fallaen enn oferen kinniget a oue d'ezhan eur banne guin. Kerkent ha masklevaz ar c'houez, e reaz eul lamm: « Morse, morse a vin, emezhan; prometet am euz d'ann Aotrou Doue ha d'am c'houronall na iaze bikenn banne guin ebed emgann, hag e talc'hin mad d'am ger beteg ar maro. » Nebeud a vezvieren a heuil skouer Lorans; souseurde guelont a rear hiniennou.

Eul labourer douar euz hor bro a zemezaz, abalamour d'he danvez da eur plac'h iaouank ha na gare ket: eonch em doa da gendec'hel gand danvez he vreg ar

vuez direiz en doa heuliet eur pennad a oa e kuz. Ann dimizi a oue great eta; mes hep dale ar vreg baour a velaz e oa dimezet d'eur mezier. Gouzanv a reaz gouskoude daou vloaz hep en em glem; erfin, eunn deiz, ar mezier reuzudik a zeuz da lavarout d'ezhi penaoz en doa dastumet d'le evit pere ez ead da ober mizou d'ezhan, hag en doa c'hoant e raje he aotre evit guerza unan euz he farkeier evit ho faea. Ar vreg kez a roaz d'ezhan meur a ali mad. Prometi a reaz d'ezhi chench buez. Erfin, skuiz gand ann devor anezhan, e plegaz hag e sinaz ar skrid guerz. A benn eunn nebeud miziu goude, goulenn nevez evit guerza eur park all. « Ma mignon ker, emezhi d'ezhan a-grenn, refus a rann: eur c'hrouadur am euz da vaga, red eo d'in mirout d'ezhan eunn fam bara, rag guelout mad a rann brema na hell ket konta e nep doare var-n-hoc'h. » Ar mezier reuzudik a implijaz bep eil tro, pedennou, gourdrouzon, evit kaout asant he vreg baour; mes ar vanm na blegaz ket; ha na dlie ket ken-nebeud hen ober evit mad he c'hrouadur. Eat droug eun-han dre ar refus-ma, da behini na edo ket e gortoz, ann den-ma, anter vezo, a gemeraz eur vaz, a skoaz gand hi var benn he vreg paour, hag he ledaz var al leur-zi kazi heb buez, o terc'hel etre he divreac'h e c'hrouadur kez. Tri devez goude e varvaz o pardoni d'he bourreo, hag oc'h erbedi d'ezhan ar paour, kez krouadur. Ar justis o veza gouezet kement ma a lekeaz herzel ar mezier reuzudik, pehini a oue barnet d'ar galeou epad he vuez.

Eunn den iaouank euz ma anaoudegez a oa en em viret, beteg an oad a 30 vloaz, oc'h ann tech mezuz-ma, beza en doa bevet eun eunn doare skoueruz, hag e oa karet hag istimet gand kement hen anaie. Heria a reaz d'eur c'har d'ezhan: mont a reaz da ren ar pez a oa digouezet gand-han. Ober a reaz anaoudegez gand mezierien. Eunn devez, eun eunn hostaliri, en doe tabut pe disput gand unan euz he genseurte a vuez diroll, eunn emgann a zavaz, hag ar reuzudik-ma pehini en doa nerz braz, na skoaz nemet daou daol don; mes unan a lazaz eunn den, hag e-gile a vac hagnaz eunn all. Barnet eo bet da 6 vloaz prison.

Eul labourer douar pehini am euz anavezet a zalc'he evit eur priz izel tre, unan euz ann tiegeziou-ze, evel m'ez euz c'hoaz kement e Breiz, pere n'int het biskoas guelet gand ho ferc'henned. Ar gounidegez braz a roe ann tiegez-ma a reaz d'ar merour ha d'he vreg en em daol d'ar vezventi. Diou vech ar sizun ez eent d'ar marc'had da ziou gear dost, tremen a reant eno ho devez er c'hafeu, hag e tistroent d'ar gear mezo ho daou. Klevet am euz ar goaz o lavarout meur a vech penaoz hen hag he vreg ho doa evet deg gueach talvoudegez ho ziegez. Ann tiegez-ma a oue guerzet: ar mezier hag he vreg a oue roet d'ezho foued ann or. Kemerout a rejont eunn tiegez all, hag e kendalc'hjont ar memes doare da veva; pemp bloaz goude, e oant revinet, hag ho bugale a oa eat da servicha.

Ar vezventi a zo eunn tech gouelvanuz etouez ar voazed; mes pa'n em gav etouez ar merc'hed ec'h hel-

leur lavarout ez eo eunn heuz mantruz. Penaoz ar vaouez reuzedik pehini a dremen ar vella loden euz he amzer er c'hafeou hag enn hostaleriou, pehini a veuz he skiant er guin-tan pe e evachou all, ec'h hello-hi taol evez var he ziegez, diorren he bugale, mirout henor he fried? Eur vaouez gouneet gant ann droug-ioul heuzuz-ma ha ne d'ef-hi ket gouestl euz ann holl dechou? Na peger trist skouer e ro-hi d'he bugale ha d'he zervicherien! Hag hi a hell lakaat he respeti? Pebez beli ec'h hell kaout enn he zi eur vamm disprizet? Ma eo trist doare eur vaouez honest pehini e deuz eur goaz mezvier, doare eur goaz honest pehini en deuz eur vreg mezvierez a zo tristoc'h c'hoaz. Oh! nag hen eo dign a druez bugale baour eunn hevelep mamm.

Pa zonzann ez euz, em brô, merc'hed pere a laer ann tiegez evit goualc'ha ann droug-ioul mezuz-ma, am euz mez da veza Breton. Beza ez euz, enn hor bro, eleiz a verc'hed pere a zeu bemdez d'ar marc'had da verza ar pez a dennont euz ho ziegeziou, ha pere a gemer divar ar pez a verzont arc'hant evit eva kafe. Evel na vezvont ket, e sonch d'ezho ne d'int ket kablu; en em drompla a reont, rag ann arc'hant a zispignont evel-ze, a zo red d'ar famil, aliez eo bara ho bugale.

Gounideien a Vreiz, ma c'henvroiz, me garfe beza ken helavar evel hor prezegerien hag hor skrivagnerien vraz, evit rei d'ar skrid-ma ann nerz a fellse d'in en defe evit rei d'e-hoc'h da gompren pegement e tleit kaout heuz oc'h eunn tech ker mezuz, evit diskouez d'e-hoc'h peger noazuz eo ar vezventi d'ho korv, d'ho c'hoz, d'ho famil, d'ho prud vad! O veza, n'ounn ket goall helavar, e leverin d'e-hoc'h, gant ar garantez am euz gouestlet d'e-hoc'h pell-ze. Enn hano ar relijion, pehini a garit hag a heulit; enn hano ho famil, hoc'h henor, ho madou; enn hano ho prô, ho prasa mad; enn hano silvidigez eternal hoc'h ene, c'houi pere hoc'h euz bet ann heur vad da ziuall oc'h ann tech mezuz euz ar vezventi, taolit mui-oc'h-mui evez out-hi; ho pezet heuz out-hi ato; tec'hit diouc'h ar c'hafeou, ann hostaleriou hag ann darvoudou fall evel diouc'h ar vosen!!! C'houi pere hoc'h euz bet ar gouall heur da lezel ann tech fall-ma da zont a-benn ac'hanoc'h, distroit eunn-hoc'h hoc'h-unan, ha grit ho kalloud evit chench buez!!! Konversion ar vezvierien a zo diez; mes ne d'eo ket impossibl d'ann hini a fell d'ezhan e guirionez distrei oc'h Doue, ha pehini a c'halv he c'hras d'he zikour.

Bugale baour pere hoc'h euz ar goall heur da gaout kerent mezvierien, na heulit ket anezho; mes n'ho disprizet ket ken-nebeud: na ve nepred guir da zisprijout he gerent, daoust pe seurt buez bennag ho defe. Pedit kentoc'h evit-ho.

Achuomp dre eur skouer spontuz: « Brema ez euz « nebeud amzer, eunn niver bennag a vezvierien en em « gavaz assamblez enn eunn hostaleri. Er mare-ze, e « oa eunn arne braz. Eleiz anezho ne oant ket re zi- « saouzan: pep luc'heden, pep strakad kurun a ree « d'ezho stoui ho fenn. Unan euz ho zouez, mezvoc'h « eget ar re all, a zigoraz ar prenest hag en em lekeaz

« da lavarout blasfemou heuzuz evel-hen: *Me a ra goad*
« *oc'h ar gurun; me hen difl d'ober droug d'in.* A-benn
« ma oa dent ar c'homzou-ma euz he c'henou, ma oant
« tann-foultret. » Evel m'her guelit, ma mignounet, a
c'hastiz na zaleaz ket.

Ra zeui gounideien Breiz da zitezel ar vezventi, ha
heb dale ho devezo ann istim hag ar vrud a zo dleat d'ho
micher. J. V.

FABLEN.

Ar Bleis o kentellia he vab.

Enn eul levr fablemmou, n'ouzoun e pe andret,
E kavis, n'eus ket pell, an histor-ma kountet.

Eur bleis a lignes huel, enn he ghenta amzer,
Vid he amezeien n'oa ket bet re dener;

Rag he galoun didrues ne espernas morse
Nag ebeul, nag ounner, na danvad, na leue.

Mes erfin gand an oad taghet ha dinerzet,
E sonjas da gheui d'he oll vues tremenet;

Beuzet enn he zaëlou, bruzunet a c'hlac'har,
E c'halv he vab unik ha d'hezhan e lavar:

Evit guir, va mab ker, ha d'an oll eo anat,
Ar bleis n'hen deuz er vro nemeur a renou mad:

Ne deo ket heb rezoun, hag en anzaio zo red:
Rak goueled hor c'haloun ne deo pura bec'hed.

Vid-houn-me pa gavis, ne gipotis morse;
Mes taol dant da ema, taol ivin d'eghile,

Hem heus ato bevet divar goust va nessa,
Ha paour ha pinvidik a ro d'in da veva;

Er mintin-ma memes gavrik eur c'hreg'hik paounn
A zervichas d'am lein, vit-hi da vea dizaour.

Ma karfemp-ni beva gant avel ha pri-prad
Ne dennfemp ket varn-homp na mallos nag argad.

Bemde e touez an dud ni vesse dizoursi
Ha d'hezo e rentfemp memes chervich ar c'hi.

Chenchomp eta hor bue, diskuezomp kals anken
Ha bevomp er bed-ma guelloc'h da viziken.

Hag ar mab var he buch, seder ghis eur marmous
Prezeghen he dad kos a zelaoue didrous,

Pa erruas da dremen eun danvad dianket.
Daoulagad ar c'hrenn-veis a lughernas abred;

Ne zelaouas mui na tad, na prezeghen
Ha dre gorn he c'hinou e rede he c'hlaouren;

Rak ne grede sailla dre respet 'vid he dad
Rezolvat da viken da zivoueret freskat.

Mes tad koz, me zo sur, an danvad pa velas,
A loskas he zarmoun, rak d'he vab e laras:

Siouas! pebes tam kik! Doue he vinnigho!
Evid eur vech c'hoas greomp eun tam friko;

Doue ne fell ket d'hean e raffemp c'hoas koreis,
Pa zigass d'homp hirio eun hevelep preis.

Var an heur an danvad zo lakat a dammou,
Hag an daou vleis varlerc'h a lippas ho mourrou.

An histor-ma, lenner, eun dra d'homp a zesko:
An techou grizienet heb poan den ne drec'ho:

Lavaret yün zo æz pa ve gan'heomp kovad,
Pa n'eus tu da noazout æssoch c'hoas bea den mad.

« Mas p'erru un natou, pe an tu da bec'hi
« abba hor pac'hejou koz e kouezomp heb stourmi.
O. H.

Hano ar Zent evit ar Sizun-ma.

DIBEN, 1. — Euz an deiz.

DIMELLS, 16. — Euz an deiz.

DIMICHER, 17. — Euz an deiz.

DIZIQU, 18. — Ar Iaou Gamblit.

DIRGUENER, 19. — Guener ar Groas.

DISSADORN, 20. — Sadorn Fasc.

DISSUL, 21. — Ar Sul Fasc.

An abostol hirio.

Va breudeur, cassit kuit ar goell coz, evit ma viot
eun toas nevez, evel ma zoc'h e guirionez bara ep goell;

rag hor Pasc ni eo Jesus-Christ bet lakat d'ar maro
eyidomp.

Rag-ze greomp ar gouel-ma, ne ket gant goell coz,
ne ket gant goell ar fallagriez hag ar pec'het, mes gant
ar bara ep goell euz an eündet hag euz ar virionez.

(Kenta lizer S. Paul da gristenien Corinth. v. 7.)
G. M.

KELEIER.

An Aotrou Masangroas, person Rumengoll, so maro
en derveziou tremenet.

Ar seis varnugent a vis meurs hon Tad Santel ar Pap
en deus preconizet (discleriet e c'hanve) an Aotrou

Lanumou, arc'hescop a Reims hag an Aotrou Lavigerie,
arc'hescop a Ajer, an Aotrou Thomas, escop euz ar

Rochel, an Aotrou Foulon, escop a Nancy, an Aotrou
Hacquard, escop a Verdun, an Aotrou Las Cases,
escop a Constantin.

Discleriet en deuz ive en doa sonch da ganoniza,
emiz evel, ar plac'h eurus Germana Cousin.

Ar veladen vraz (Exposition) so digoret e Paris ar
c'henta ebrel, evel a ioa bet lavaret. Mes n'eus ket bet

martez kement a zolanite evel a zonje lod. N'edo ket
c'hoas pep tra e pouchas.

An amzer eme *Gazeten ar Meziou*, ne deo ket euz ar
guella evit madoù an douar. Lod eus ar gounidegueziou

so chomet divezat da ober. An edou so divalo e lec'hien-
nou, ar pez ne bromet ket re evit an eost a zeu. Ke-
mentse a vir oc'h ar brenerien ed na ellont lacat rabat

da zont varnezhan evel ma o defe c'hoant.

An oll a voar e verzer brema kik kezeg e Pariz hag
e meur a gear-all. E Pariz e verzer euz ar c'hig-ze e

trizeg stal da nebeuta. An oil a voar ive e rer tro kear
bep bloas e Paris gant eun ejen lard. Da anter ar c'ho-

raiz ez eus lakat ive eur marc'h lard da ober tro kear.
Hoguen den n'en deus great van euz a guementse.

Moalc'h eo ober ar follentez-ze gant an ejen lard.

Cren-Douar. — Ervez eur gazeten euz an Turki,

ez eus bet eur c'hren-douar, pe kentoc'h meur a gren-
douar e kear Smyrn hag er c'harter tro var dro, dreist
oll en enez Mytilen, epad tri dervez er penn kenta a vis
meurs. Eur grenaden dreist ar re all a so padet eur
c'hard heur pe ouspenn. Ar mor en em zave hag a eo-
nenne evel eur podat dour o virvi. An tiez a hije, a
orjelle, hag ep dale e covezent en ho foull. Tiez, kistel,
paleziou, ar gatedral, oll int discaret pe freuzet. E gou-
elet kear, an douar so deut da faouti, d'en em zigueri a
hed eur ru, hag e deus lonket an diou renkad tiez a voa
var ar ru-ze. En ho leac'h ez eus brema eur ster bouillen.
Cals tud so bet lazet, flastrèt dindan an tiez o coeza.
Ouspen mil den a leverer o deus collet ho buez. Ar re
all so en em dennet var an huellenou e meaz a gear,
hag eno, na petra-ta, emaint en dienez a bep tra.

MARVAILLOU.

EUN DIMIZ A DREUZ. — N'eus ket pell, en eur barrez,
daou zen yaouang, Pipi a Derenez ha Jannet an Diben,
a c'hea d'an ty kear evit beza caieret, araog dimezi.

An den yaouang a iea scoas oc'h scoas gand ar
plac'h a dlie beza e c'hreg. En eur bignad e skaille-

rou an ty kear, e tolas e droad, eb er gouzoud, var
losten Jannet hag her rogas. Houtan en eur vech he

losten roguet, a lavaras eren ha dirag an oil, rag tra-

feuille oa gand an droug:

Ah! den sot hag imparfall!

Pipi ne reas van ebet: sevel a rejont atao d'an ec'h.

Er gramp, ar mear coz, e lunedou var e tri, en dro
d'he groaz-lez he durban tricolor, ha ioa o c'hortoz.

Ober a ra e damic sermoun gand e god civil, ha goude
he c'houlen digant Pipi hag hen a guemer evit pried

Jannet an Diben eno present:

N'oun ket ker sot na ken imparfall-ze, eme Bipi.

Ho clevet eun hevelep respount he savas buan gros-

moll e touez tud an eured. Ar mear coz a ioa mantret,
biscoas n'en devoa guetlet kement-all: Kerent ar plac'h

yaouang a ioa glac'haret: Pipi ebken a ioa laouen da
veza anavezet character e c'hreg araog ober ar c'houlm

bras.

Dond a rejeur er meas. Evid en em gleved e c'hejeur
da dy Voris da eva bep a vane. An den yaouang a

lavare ne guemerche biken ounnes evid pried: mes
he c'herent ha en em glemme: coll e brud vad d'ho

merc'h n'oa ken kementse.... Hen hevelep affer a ioa
cals goassoc'h da eur vaouez evid da eur goas, etc....

guelloc'h oa ancounac'had tout a cass an traou da benn.
Mes ne oue moyen ebed da zistrei Pipi: An daou c'her-

man, den sod! den imparfall! lavaret dezhan, a dreuz
he veg, evid eun dra ken dister, a vouldinelle atao en

dro d'he ziuou scouarn.

Abars ar fin hunan benac a gavas ar voyen da regli
an traou evid ar guella. « Gueled a ran, emezan, he
« zeus aman freuz: Pipi n'en deus ked effer a Jannet
« a bris ebed. Coulsoude eo eun dismegans vras d'ha

« Janned beza dilezed gand eur goas : coll e fortun
 « d'hei eo kementze. M'en a gaf dign he ve-mad deomp
 « ober an dra-man. Deomp adarre d'an ty kear ; pa
 « c'houlennno an Aotrou Mear digand Pipi hag hen a
 « guemer Janned evid pried, he respounto : Ia, ha pa
 « raio digand Janned ar memes goulenn, houman ha
 « lavaro : Nan, evel-ze e vezo freuz er memes-tra ; ha
 « brud vad Janned a jomo gand-hi, car er c'his-se he
 « vezo lavaret eo hi eo he devezo lakead freuz. »

Ar goms a blijas. Distrei a rejeur d'an ty kear. An
 Aotrou Mear a lakeas adarre e durban *tricolor* en dro
 d'he groas-lez. Pa c'houlennas digant Pipi hag hen a
 guemere Janned an Diben evid pried, Pipi a respontas :
 Ia, ervez ma oar en em glevet. Mes pa oue gread ar
 memes goulenn digand Janned, houman a respontas ive :
 Ia, a vouez huel. Holla ! holla ! eme Bipi : ne ket evel-
 henn oamp en em glevet ; an dra-man, Aotrou Mear,
 ne deo nemed eur farcerez. — Aman, eme an Aotrou
 Mear, en eur starda e lunedou var he fri, aman ne vez
 morse gread farcerez, aman an oll draou ha zo *serius*
 (poezus) ; dirag al lezen dimezet oc'h.

A cetu he pe guis he tapas eur goas Janned an Diben.
 ALAN.

Eur c'hreg hag a gar... dillad he goas. — Eur punser
 a goezaz eun dolzennat douar varnezhan epad ma edo
 o toulla eur puns. Gloazet e voue, mes gallet e voue he
 denna beo euz a zindan an douar coezet varnezhan. Ar
 medecin hen louzaouaz, hag en eur vont divar he dro,
 ez eas da gas da c'hreg ar punser ar c'helou trist euz an
 darvoud digouezet gant he fried. Houma a zirollas da
 vouela. O va Doue, emezhi !

— Na vouelit ket, eme ar medecin, ho pried a jomo
 beo.

— Va Doue ! va Doue ! eme ar c'hreg.

— Lavaret a ran deoc'h, abenn eun nebeut dervezioù
 empare adarre.

— Va Doue, emezhi, ha me roet dezhan hirio dres
 eur prieden nevez hag eur bragou fresk hag a vezo sclab
 bezet ha freuzet marteze !

EUN ARMEL EUZ AR C'HIS NEVEZ. — An Aotrou
 X... hag he bried a vef didrouz hag en ho ez.
 X... deuz eur garg hag a ra dezhan goumit var
 adrodeg mil lur er bloas. An Itron so ganthi ar bragou
 pedaviana ar iale'h, hag evel ma zeo eun tamig piz
 bocha ma sell tost, ez eo red d'an Aotrou lacat etre he
 daouarn kement a c'honnit ep ma chomfe eur guen-
 nec gantha. Gant aoun zoken na zalc'he an Aotrou
 eun dra bennag en tu diouthan, an Itron a furch alies
 kement corn so en ti, evit guelet ha n'en deus ket he
 fried eur guziaden bennag.

E guirionez an Aotrou X... en deuz eur guziaden.
 Eun nebeut arc'hant bet lakat gantha en eun afer
 a zigas dezhan bep bloaz eur c'hant scoejou hen-
 nag. Ar re-ma a zervich dezhan evit he zispignou, hag

an Itron n'ho guel morse. Hag e peleac'h eta e euz au
 arc'hant-ze ? Gortozit, lenner, bremaic e velot.

An Aotrou X...-so eur chasseour bras. Kerkent ha
 ma c'hell caout eun tam amzer, em crog en he fuzil,
 hag ez a da redeg ar c'had, ar c'honiell pe ar glujuri.

Eun dervez, o tont euz he labour, ez a da glasc he
 fuzil, ha n'edo mui eleac'h m'oa boas da veza. Pa
 velas-ze e chenchas liou, en em lakeas da grial, da
 c'hourdrous, da ober eun trouz evel pa vije penfollet.
 An Itron a ziredaz o clevet ar safar.

— Peleac'h eo eat va fuzil-me ? Eme X...

— Eat eo gant Jul en deus guelet eur c'hudon pe eun
 dube er penn all al liors. (Jul so eun nis d'an Aotrou
 X..., eur potr seiteg pe drivac'h vloas).

An Aotrou, muioc'h mui e counnar, a ia en eul lam
 el liors ; mes a veac'h eo eat euz a zor an ti ma cleo
 eun tenn. Neuze e losc eur griaden scrijuz, hag e red
 ato d'ar penn all euz al liors. Pa zigouezas. edo he niz
 pleguet o testum eur c'hudon (pichon gouez) discaret
 gantha. Araog m'en doa bet amzer da zavel he guen,
 ar c'heas Jul en doa recevet oun taol troad euz ar re
 galeta n'em eus ket izom da lavaret deoc'h peleac'h.
 Ar paour kez niz a loscas neuze ive eur griaden.

Hoguen perag eun hevelep counnar en Aotrou X... ?
 Setu ama. An Aotrou X... en doa great he armel euz he
 ganol fuzil. An Itron a furch e pep leac'h, en he c'ho-
 dellou couls hag e leac'h all ; mes eun aoun braz e doa
 rag an tennou ; ar guel euz eur fuzil he lakea da serija.
 An Aotrou-ta a lakea he arc'hant e canol he fuzil, rag
 gouzout mad a rea ne daje ket he bried d'ho c'hlas
 eno. En dervez ma comzomp anezhan e voa e canol ar
 fuzil tric'hant antercant lur e peziou aour a ugent real.
 Ar c'hudon, evel a velit, a gouste ker avoalc'h d'an
 Aotrou X..., hag an niz pehini a voa fougue enha hag
 a gave dezhan beza great eun taol caer o tiscar al
 labous, en doa great eun taol fall avoalc'h evit he eontr.

Gouscoude o tisplua ar c'hudon, e voue caved eur
 pezig a ugent real chomet e touez ar plun. Ar plac'h
 hen displue a voue souezet meurbet, rag ne vouie guer
 euz ar pez a voa tremenet. Biscoas n'e doa guelet eun
 hevelep tra ; biscoas bete neuze n'oa bet etre he daouarn
 eul labous evelse aour gantha en he c'hodellou ; me fell
 din lavaret dindan he ziouskel. G. M..

PREIZ AN ER.

KEMPER. — 6 Avril.		PONT-NABAT — 4 Ebreil.	
Priz ar c'hant lur.		Priz ar c'hant lur.	
Guinis....	44 lur, 63 c.	Guinis....	45 lur, 53 c.
Segal.....	9 lur, 22 c.	Segal.....	9 lur, 38 c.
Eiz.....	9 lur, 75 c.	Eiz.....	9 lur, 38 c.
Ed-du....	7 lur, 92 c.	Ed-du....	7 lur, 29 c.
Kerc'h....	8 lur, 93 c.	Kerc'h....	9 lur, 50 c.
Avalou-douar	4 lur, 50 c.	Avalou-douar	4 lur, « c.

Ar Gerant: AR. DE KERANGAL.

Kemper, moulet gand AR. DE KERANGAL, Moulter an Escopci.

FEIZ HA BREIZ,

KELOU A BEP BRO, HA KENTELIOU VAR BEP TRA,

DIGASSET BEP SUL

Da guement Christen a goms ar brezounee.

Eun Abonnament d'ar Gazeten à goust :

Evit eur bloas.....	DAOU SCOET.
Evit c'huec'h miz.....	EUR SCOET.
Evit tri miz.....	C'HUEC'H REAL.
Eur gazeten ebken.....	DAOU VENNEC.

Ar bacamant a dle beza great araog caout ar gazeten.

ALIOU.

Ar scrijou a ve c'hoant da lacat er gazeten a dleer da
 adressi oll d'an Aotrou MORVAN, Beleg e Kemper.

Ar paeamanchou a dleer da adressi d'an Aotrou SALAUN,
 ebken. An abonamant a guemerer e ti an Aotrou SALAUN
 librer, ru Kereon, e Kemper.

KEMPER, 20 Ebreil 1867.

*Alao e caver east he amezeg caeroc'h evit he hini, a
 lavare guech all hon tadou coz. Lavariou hon tadou coz
 a so guir peurlieasa ; gouscoude al lavar-ma em befe
 c'hoant da lavarèt ne ket guir ato. An den a zo ken
 douguet d'ar fougue, ma zeo eur boan evit han anzae e
 ve disteroc'h he dra evit tra ar re all. Mar oc'h eus
 c'hoant da blijout d'oc'h amezeg, da dremen diouthan,
 d'he lacat da gaozeal, meulit, fougueit he dra dirazhan
 hag e viot ato diguemeret mad. Hag e ve red dezhan
 anzae outhan he unan en deus nebeut, eo dister he dra,
 bezit sur e carfe guelet ar re all o cridi en deus muioc'h
 ha guelloc'h evit n'en deus. Ar baourentez so ken he-
 gasus, ma vez mez oc'h he anzae. An den, evel den, so
 re orgouilluz evit anzae ez eo paour. Ne deus nemet eur
 guir gristen, sclereat dre ar feiz, hag a elfe diguemeret
 a galon vad ar baourentez evit heulla ar skuer roet
 gant Jesus-Christ. Red eo en dese eun-den eur feiz cre
 evit ma plischfe ar baourentez dezhan, ha kementse so
 ker guir, ma veler ar paour oc'h en em lacat e reng
 ar pinvidig kerkent ha ma cav tro d'hen ober, da la-
 varet eo pa en em gaf gant tud ha n'hen anavezont ket.
 Evelse al lavar-ze euz hon tud coz ma comzen anez-
 han bremaig, n'her c'havan ket guir avoalc'h. Guiroc'h
 calz e cavan al lavar-all-ma :*

Micher estren eo lacat da grazza. — Setu ar sonjou a
 den er speret o lenn pennadou scrit evel hema so ama
 varlerc'h.

« E Keraven ez euz daou dieg. Unan anezho a voa en
 dez-all var eun dachen foar o cozeal gant pevar pe bemp
 labourer douar evel dhan. N'ho anaie ket ha ne sonje
 ket dezhan ken nebeut beza anavezet gantho. Dont a
 rejor da gomz euz an danvez. Tieg Keraven a lavaras :
 E Keraven ne ket peorien a so. Ne domp nemet daou
 amezeg, hag ez eus oc'h Keraven c'huec'h mil scoet
 level ha va den a zave sounn he vruched o lavaret ke-
 mentse. Pa voa eat kuit, unan euz ar re a voa oc'h he

zilaou, hag hen anaie, a lavaras d'ar re-all : Guir a lavar
 an den-ze. Keraven so c'huec'h mil scoet leve outhi.
 Goassa so evit hema, eo ar c'huec'h mil scoet leve so
 oll d'he amezeg, hag hen ne deo nemet eun ozac'hic
 paour a zo gantha tri pe bevar dervezig arat dioc'h
 ferm.

Eur scrifagner brudet a lavare ive divar ben an ioul-
 ze o deus an dud da veza pe da dremen evit pinvidik :
 An den n'en deus netra so troet bras da ranna gant ar
 re all ; an hini n'en deus netra so douguet da lacat
 danvez ar re all en he han. Evelse kemerit eur ser-
 vicher, eur servicherez, lakeomp eur mestr mevel mar
 kirit. Er sizunvezioù kenta e lavaro *kar va mestr* ;
 abenn eun nebeut e lavaro, *hor c'har-ni pe ar c'har*
a zu-ma ; hag abars penn ar bloas, pell a vezo, e la-
 varo *va c'har*.

Kementse a elfe rei tro da c'hoarzin, mes rei a ra
 ive tro da zonjal pegument ez eo kentelioù ar bed
 heullet muioc'h eguet kentelioù Jesus-Christ. E scol
 Jesus-Christ, en Aviel, e tesker eo euruz ar re haour,
 eo euruz ar re zo dispriet. Ar c'hentelioù-ze ne dint
 heullet nemeur. An den zo red dezhan en em drec'hi
 he unan evit ho heulla. E scol ar bed e tesker caret
 ar fougue hag an danvez, hag an den n'en deus ket izom
 da veza pouzet evit en em staga oc'h an danvez, evit
 en em rei d'ar fougue. An dra-ze a gaf, ep he glasc, e
 gouelet he galon bet gouliet dre ar pec'het. Hoguen ha
 ne ket muioc'h aze e tlefet meuli ar re o deus ners-
 calon avoalc'h evit dilezel madou ha fouguerez ar bed,
 evit en em rei d'ar binijen ha d'ar baourentez ? Ar re o
 deus furnez avoalc'h evit anaout pe guen dister eo traou
 an douar hag ho bressa dindan ho zreid ? ha pa deu an
 dud difeiz da gaout abeg enho, ha ne deo ket guir e ta-
 mallont tud hag a so cant guech furoc'h ha courajussoc'h
 evitho ? » G. M.

Kement hini a vel an Tad Santel ar Pap Pii nao, a so
 oll souezet o velet he ners calon hag he vadelez. He

enebourien zoken so red dezho anzaou ne allont ket miret d'he respeti ha d'he zouja. Gouzout avoalc'h a reont emma etre he zaouarn ar c'hallout-ze roet dezhan gant Jesus-Christ var an oll garteriou euz ar bed. Evelse ive ar bopl a Rom ne ell ket guelec ar Pap o vont hag o tont ep rei dezhan mercou anat euz ho c'harantez evithan. Pii nao ive dalc'h mad a lavar euz ar c'homzou-ze a ro selear da anaout he galon vraz hag he speret.

Bep sizun euz ar c'horaz, eur c'habucin, an tad Loiz a Drant, a ra eur brezeguen dirag ar Gardinalet hag an Eskibien, er Vatican. Hon Tad Santel a ia ive d'ar prezeguennou-ze. Er sizun all an tad en doa prezeguet var an avi; goudeze oa deut da zaoulina dirag ar Pap evit beza benniguet gantha. Pii nao a lavaraz dezhan : « Biscoaz an avi ne doa great poan din; hirio gouscoude em eus bet eun tamig avi oc'h ho clevet; me garje e vijen bet goest da brezeg evel ma rit. »

Etre stajon hon Tad Santel ar Pap ha Rouantelez Napl ez eus bandennou laeron hag a ra distruch dre eno. Torfejou serijuz a reont, dioc'h ma leverer, hag e taolont ar spont etouez tud ar c'harteriou-ze. Evelse Rom a gas soudardet evit difen tud ar vro oc'h al laeron-ze.

Missionou. — Ervez eul lizer scrifet gant eur Missioner euz an Thibet, ez eus digouezet eno darvoudou hag o deus distrujet en eun dervez an oll labourou great epad pemzeg vloas. Hoguen an droug-speret, daoust d'he oll finessa, so bet tapet el las stignet gantha he unan. Doue a so ato trec'h d'an diaoul. Ar peoc'h so deut varlerc'h ar bar amzer, hag ar visionerien, pere ne brezeguent diaraog nemet e daou leac'h, her gra hirio e pevar, hag an niver euz ar gristenien a gresc cals muic'h.

Enezi Markis. — Eul leanez a scrif euz an enezi-ze e voant digouezet eno varlerc'h eur c'hlenvet braz en doa great cals distruch. Ar re vraz a ioa bet sammet gozig oll; n'oa chomet nemet ar vugale. Ar re a voa chomet heo euz ar re vraz a voa tec'het d'ar meneziou. Pa zigouezaz al leanezet, e tiskenjont d'ho digoumeret, ar merc'hed da guenta. « Hoguen, eme al leanez a verk kement ma, e pe seurt stad edont, ar merc'hed keiz ! Guisket oant tost da vad evel ma voa guisket Adam hag Eva er barados terrestr. Rei a rejomp dezho ar pez a ellemp da zioueret a zillad. An oll merc'hedigou-bihan euz an enezen so ganeomp, ha cals euz ar re vraz a fell dezho ive chom en hon touez. Ne ket eta labour a vanc deomp.

Ar voazet a deuz ive d'hor guelec d'ho vro. Guisket oant evel ma en em viscont pa zeont d'ar vrezel. Eur scrij oa ho guelec. Daou vouchat plun var ho zal evel daou gorn, stag oc'h ho dioucouarn var bouez daou ibil; en dro d'ho gouzoug eur pez collier dent moc'h pe dent pesket; en dro d'ho c'horf eur c'houris bleo, bleo tud lazet pe debret gantho. Ho c'hroc'hen marellet, brizellet, merket varnezhan a bep seurt loenet euzus. Evit droug-spererejou e vijent kemeret buan avoalc'h. »

Kementse a ziskuez pe guen trist eo ato stad ar re ne anavezont ket ar guir Doue, n'int ket sclereat gant sclerijen ar feiz.

Bez' ez eus tud hag a so dalc'h mad o crial a enep ar c'houchou, a enep ar relijiuzet, al leanezet a ra scol d'ar vugale. Al leanezet, ar relijiuzet, ar vrendeur, c'hoarezet en em emel da scolia bugale, ne dint, emezo, nemet ezen, ne ouzont netra. Hoguen, ma ne voar netra ar vistri, pe seurt descadurez a oufe ar vugale da receo digantho ? Mad, setu ama, hag a ziskuez pe guel leal eo ar rebechou-ze.

E kear Marseil ar mear hag he conseil o doa laket sevel daou c'hant lur evit rei priziou a honor d'ar vugale desketa ken etouez ar re so savet gant breudeur ar scoliou christen, ken etouez ar re so scoliet gant mistri lik.

Breudeur ar scolachou christen eta o deus dibabet ar re vella euz ar vugale a guelennont; ar vistri scol lik o deus dibabet ar re vouezieca euz ho scolaerien, hag an daou rum vugale-ze so bet laket oll en eur vanden da ober ar pez a c'halver *compositionou*, da lavaret eo da velet pere anezho a vouie guella ar gallec, chiffra, scrifa brao, scrifa difazi.

Hoguen setu ama petra so digouezet. Peder *gomposition* so bet great, hag ec'h hanvet unneg evit pep *composition*. Evit ar scrifa difazi (ortograf), an unneg kenta a voa oll scolaerien ar vrendeur; scolaerien ar vistri scol lik n'eus ket bet hano anezho. Evit scrifa brao, unan epken a scolaerien ar vistri scol so bet hanvet, ha c'hoas n'oa nemet an unnecvet. Evit ar galleg o deus gallet caout daou scolaer hanvet, ha tri evit ar chifr, hag an nemorant oll, scolaerien ar vrendeur.

Setu aze da viana eun testeni hag a so selear avoalc'h. O velet bugale, savet gant breudeur ar scoliou christen o c'hounit kement var bugale kelennet gant mistri scol lik, eo red anzaou e c'hoar eun dra bennag ar re o deus ho desket evelse, ha ne de ket e Marseil epken, mes e pep leac'h hag a bell so, ar relijiuzet, al leanezet, ar vrendeur, ar c'hoarezet a ra scol d'ar vugale, o deus diskuezet d'ar re a ra dezho an honor d'ho guelver ezen, e rajent mad avoalc'h o telc'her an hano coant-ze evitho ho unan.

Pamiers. — En eur barrez a escopti Pamiers e voa eur gouel caer ar c'huec'h varnuguent a veurs. Eur brotestantez a deue d'ar guir relijion, d'ar guir iliz. An distroze so bet scueries meurbed, a scrif person ar barrez-ze da rener eur gazetenn a Douloz. Ar brotestantez-ze a zougue medalen sant Joseph tri bloaz a voa. Pell a ioa e vije deut d'ar guir iliz panefe counnar ha gourdrizou ar brotestantet. An aoun-ze a vire outhi da ziskuez a vel d'an oll ar guir feiz a voa en he c'halon. Meur a vech on euz he guelec stonet e treid ar Vere'hez didach, hag e lavare da Vam Jesus : « O va mam vad, va breudeur kez n'ho caront ket, ha gouscoude c'hui a zo ker carantezuz ! » Erfin Mam Doue e deus bet evithi ar c'hras a c'houlenne. Great e deuz a greis calon an didac'h euz he oll fals credennou. Pa zeo bet scuillet var he zal an douar a ro ar vuez, ne deus ket gallet miret da lavaret : Keit all a ioa, o va Doue,

oc'hortozen kement-ma ! Den ne oufe merca al levezet a gargue he ene pa e deus recevet he Doue.

Armen. — En Armeni ar c'harteriou bet distaguet d'he c'harteriou iliz dre ar *schism*, a c'houlenn distrei d'ar vugale. Ar vandennou, a garteriadou abez eo e c'houlenn ar c'hras-ze. Evelse on eul leac'h ez euz tregont mil den, hag en eul leac'h all bete tri pe bevar c'hant mil den hag a fell dezho distrei oll d'ar relijion catolic.

G. M.

Scrifa a rer deomp euz eur barrez a Leon :

Eur familh a lignes huel eus a ganton Guitvede departamant Finister, goude beza dija, er bloaz 1860, great ar sacrifics eus a unan eus he bugale, evit difenn ha soutenn guirion an Ilis, oc'h pere ec'h en em guemeret a zevri d'ar poent-se, o velet an enezen e pini en em gav bepret an Tad Santel ar Pab, a zo a nevez en em zantet *inspiret* da zont en eur facon benac da rei sicour dezan.

O veza comzet eus ar pez a dremen en he speret da eur mignon benac, disposet mad eveldi, dioc'h-tu ar familhou honorabl ac al loden vrasa eus a vellec'haer c'hanton, contant ha joaus da guemeret perz en eun douar ker santel, o deus digoret ho ialc'h, ac en eur alia re all eus a bere e c'hanavezent ar galon vad, da ober eveldo, o deus savet en eun isant ar zouma 520 lur evit antreteni eur zouav (eur zoullard) d'an Tad santel ar Pab Pii IX.

Evit gant Doue e teuffe an exempl-ma da veza heullet en c'hantonion all eus an departamant !

Sinet : *Unan eus a tennerien* FEIZ HA BREIZ.

BUEZ SAINT PAUL,

(Pevare pennad).

Argouannour Withur, a ioa eun den carguet a zante-

lez. Tremenet en doa ar braz euz he vuez o studia;

evel-se he zescadurez a ioa braz meurbed. He vrasa

enezia voa o lenn, ha dreist-oll o lenn ar scritur sacr.

Pa vije skuiz he zaoulagad, en em roe d'ar beden a

galon, had an oll oberou-all santel. He amzer a vije ato

ne ver d'ez han en evelep doare ma voa red d'ez han

hezal a gostez traou ar bed-man. Pa deue tud d'her

chout evid eun dra benag, ma ne zent ket buan kuit,

en em denne evel dre laer, evit mont a gostez da bidi

Doue. Setu perac e plije enez Vaz cals d'ez han, abala-

mour ar mor a ioa etre hen hag an douar, a ziardenne

eur maread tud da zont he vetek. En eur guer, kemeret

en doa Baz evit he ermitach, hag eno tre, edo, pa zeaz

sant Paul betek en han.

Dre ma edo Withur mad dreist evid ar beorrien, e

teue bennez eur maread tud izommec da doull he zor

evit elasc an aluzen. Setu ar pez a roaz tro da sant Paul

da rei d'ar beorrien-ze, eun aluzen talvoudusoc'h eguet

da rei d'ar beorrien-ze, eun aluzen talvoudusoc'h eguet

da rei d'ar beorrien-ze, eun aluzen talvoudusoc'h eguet

an hini a glaskent. Rei a reaz ar iec'hed d'eur maread tud clany ha mahanied deut di da aluzenn. Er mare-ze Withur a n'em gave en he gambro lacat var paper an Aviel euz he zourn e-unan, Paul p'hen gouelaz a stouaz he ben gand respet, ha Withur hen anavezaz ractal ar pez a ra, dieomp credi e voa ive guinnidig a vro Zaos, hag en doa anavezet guelch-hall sant Paul arak m'edo deut e Breiz. An dighemer a vone eta great da sant Paul, a voue euz ar re vella, rag ouспен mo doa ho daou calz a zantelez, ez gant hoaz euz ar memez bro, ha zoken kerent-tost, rag m'ar d'eo braz levezet daou vreur pa n'em guevont dre rancontr var eun douar diaveaz, eo eaz gouzont eo brassoc'h hoaz ho levezet, pa deu ar zantelez da siella ho c'herentach.

Withur eta goude beza laket da azeza Paul hag he gompagnunez, a guemeraz ive eur scabel, evit sellaou en he eaz ar pez en doa Paul da lavaret d'ez han. Ar sant a ioa dress o counta d'ar gouarnour ar pez a ioa bouarvezet e palez ar roue Marc, pa voue digasset eno var al leac'h eur pesk scrijuz da velet ker braz an avio. Ar pesk a voue digoret hag e c'hoar eur c'hloc'h en lie gornailien Paul en eur zellat euz ar c'hloc'h hag euz he c'hlevet o son; a n'em roaz da houarzin. Ar gouarnour o veza gouennet diganthan petac e houarze, Paul a lavaraz : « Evel a lavaren die hoc'h bremaic, ar roue « Marc ne falvezas ket ganthan rei d'in eur c'hloc'h en « devoa; hoguen ar c'hloc'h-ze a zo hevel hec'h euz « cloc'h Marc. Ar roue en doa seiz cloc'h hevel euz « heman; ha pa vije euz taol, e rea he zont ho zeiz. « Goulen a riz digant han, evit testeni euz he garantez, « unan euz ar c'hleier-ze. Ne roaz ket d'in va goulen. « Mez guelec a ran er vad e teu breman. Doue ha zigas « d'in ar pez a nac'he onz ar roue Marc, a Argouannour o velet ar burzud-ze a denaz daou drevecat Doue euz a greiz he galon. Ar c'hloc'h miraculuz-ze zo hec'h hirio cloc'h sant Paul. Var a leveren ar c'hloc'h-ze en daou ar gallout d'ober miraclo. »

Etre m'edo ar gouarnour ha Paul o comz an all gand eguile divar benn meur a dra, e teuz da Withur clevet ez-oa en enezen eur zerpad euz da velet hag en doa lonket daou ejen ha dabu zen en em memez deiz. He grohen a ioa ken teo ha ken caled m'a ne voa netra evid he dreuzi. Casset e voa bet soudarded en he eneb evit clasc an tu d'hen discar; mez calz anezho a gollaz ho buez er brezel-ze ha calz all ne eljont en em deha nemed dre galz a boan. Sant Paul a falvezas d'ez han mont dioc'h-tu da gaout ar gouarnour evit n'en divije mui ar vro leac'h da gaout an raz han. Caer en devoe ar gouarnour clasc distrei Paul euz eun draken pirilluz, ne hellaz ket dont abenn nem euz tam hon, eme sant Paul, rag gouzout a ran e teuid Doue d'am sicour, abalamour d'ar feiz am euz en he c'hallout. Setu eta Paul en hent : mont a ra var eun d'ar zerpad, hag o veza erruet en he glichen, e taol he stoll endro d'he houzouk, hag e cas anez han er ghis-ze en doare ma velle casset d'ar foar eur marc'h pe eua ejen. Pa ne velle ket buan avonallac'h, Paul gand eur vaz a lope hag

a zalhoe varnhan. O veza erruet er penn-all an enezen var eur roc'h huel, sant Paul a lavaraz d'ar zerpand : « en em daol var da benn er mor, ha ne deu biken « mui dre ahan. » An aneval a reaz ar pezh a voue gour-hemennet d'ez-han da ober; hag abaoue n'eo bet mui gouelet dre eno.

Withur a roaz da Baul he di evid ober eur gouent, hag cuspen ar braz euz an danvez en doa e Baz. Lezel a a reaz hoaz ganthan levr an Aviel scrivet euz he zorn e-unan. Breman ez-euz cant-ant-er-cant vloaz, al levr-ze a ioa hoaz en iliz catedral Castel-Paul. Ar sant a zigumeraz ar traou-ze gand calz a levenez euz a zorn ar gouarnour, ha prest e teu da lacat sevel eun iliz caer en enezen, ha calz tiez-all. He galon a deuas da n'em staga kement euz al leac'h-ze, ma carje beza tremenet eno an nemorand-all euz he vuez. Mez he santelez a ioa ana-vezet gand ar bobl, hag an holl a c'hoantea her c'haout evid escop. Meur a vech dija ez oa bet kinniguet d'ez-han ar gark-ze; ha Withur o velet ne voat ket evit dont abenn da ober d'ez-han he hemer, a labouraz eun tam-mic dre guz, rag aon en devoa ne deuje sant Paul da zilezel ar vro, evel m'en doa great e palez ar roue Marc, ma vije great re varnez-han.

BODEUR.

(Eur pennad all eur wech all).

T O N I C .

(Eil pennad).

Ar marc'hadour reder-bro en doa guerzet cals marc'hadourez. Teodet mad oa; lavaret a rea eur gueric bennag da bep hini, hag ar merc'hed en em denne kuit fougue braz enho. Da noz dreist oll, epad ar veilladeg, e lakeaz an oll da zigueri braz ho guinou o conta dezho cant marvail ha cant tra burzuduz digoezet gantha. Tonic dreist oll a ioa evel er meaz anezhan he unan oc'h he glevet.

Ar marc'hadour oc'h eyessaat oc'h ar potr, a lavaraz: Setu aze eur potrig hag a blij an historiou dezhan, dioc'h ma velan. Petra ve ta, m'en defe gueleit he unan ar pezh am eus-me gueleit! C'hui, emezhan, a ref evel traou gouez, ne velit ato nemet ar memes tra. Ni avad a so ama hirio, ha varc hoaz about. Ni so evel al labouset; ar bed oll so deomp.

— Ha gouscoude e c'honnezit arc'hant brao, eme ar Pastour oc'h ober eur zell treuz oc'h ialc'h ar marc'hadour.

— Ne da ket fall an traou, eme ar beacher, en eur asten he vourrou. Ar vicher so mad d'an hini a voar he ober. Neus ket pell abaoue ma emañ va unan o redeg hentchou. Kentoc'h oamp daou, ha brema e vezan enonet avechou. Dont a ra em penn eur zouch a behini e comzin deoc'h bremaic, pa vezo eat ar ribitail-ma da gousket.

Ahenn eun heur goude, Tonic pehini a zonjet a voa cousket mad, a voa digor he ziscouarn gantha franc o silaou ar gaoza voa etre he dad hag ar marc'hadour.

— Ar peza livirit, eme ar Pastour, a c'houlenn e ve

sonjet mad enha. Mad ar buguel eo marteze; mes ive, he lezel da vont ket all ganeoc'h!

— Bah! ha n'en deuz-hen ket a zisvesker da zistrei! Hoguen, petra ra-ze din-me? Dale hit-hen mar kirit. Evit ober vad deoc'h oa. Ar potrig en deus great vad din hag em oa c'hoant da ober ive eun dra bennag evithan. Hoguen ma na fell ket deoc'h, me gavo eun all Pa guini-guin ar pezh a guinigan deoc'h, me gavo cant bleac'h er unan.

— Var evelse ta, e root din dioc'h-tu aze ugent a pistol?

— Pa m'eus lavaret, em eus lavaret: ugent pistol! ha c'hui a sino din var baper e lezot ar c'hanfard gauen lakeomp... deg vloas. Me zesco dezhan guerza he varc'h c'hadourez. Va zicour a rai da vont ha da zont; en hent em dizenouo. Eur vech m'en devezo laket he zant er be- ren, c'hui velo ne lezo ket an tam da goeza d'an douar!

Ar c'hoant caout arc'hant a ioa beguet var galon Pas-tour. Nag a draou a brenje gant an ugent pistol-ze! Nag a vellaen a deuje en he damic tieguez!

En em glevet a rejont en divez var guement-ma; ar marc'hadour reder bro a jomje eis dez da vont ha da zont dre ar c'harter. Abenn an eis dez e tistroje d'an ti; ha neuze e vije roet dezhan ar guer diveza. Var guement-se ez ejot da gousket. Hoguen na Tonic nag he dad, nag he vam ne gousejont nemeur.

Pa voa eat ar marc'hadour en he dro, e lochen Pastour e voue stourm ha disput epad an dervezou-ze. Ar vam ne felle ket dezhi gueleit he map o vont diouti, ha Pastour, touellet gant ar c'hoant caout arc'hant, a iea droug enha pa he c'hleve o lavaret n'hen lesje ket da vont. Avechou gouscoude, o sonjal ive en arc'hant, e voa prest ive da rei he guer, hoguen he c'halon a vam a zave var gorre, hag e lavare adarre ne roje biken he assant da eur marc'had evelse. Mont a reaz ive da gaout he c'honfessour, hag hema a zifennaz outhi ive fiziout he map en eun den ha ne vouient ket petra oa.

Hoguen Pastour oa ar Mestr, ha ne felle ket dezhan e vije gallet lavaret e voa ar bragou gant he c'hreg. Dis-cleria a reas da Donic en doa sonch d'he rei d'ar marc'hadour.

Tonic ne c'houlenne ket guell. Beac'h en doa gouscoude o cridi, mes daelou he vam a ziskuezas dezhan a-voalc'h ne voa nemet re vir ar pezh a lavare dezhan he dad. O velet pe guer glac'haret oa he vam, ne grede ket diskuez pegument a fougue a voa enha; mes dre ma c'helle, e pigne var beg eun dorguen bennag da zellet oc'h ar c'harter, oc'h esperout gueleit ar marc'hadour o tistrei. Aoun braz en doa na deuje ken en dro. Her guleit a reaz erfin eun dervez euz a bell. Ker kent e lose eur griaden a levenez, hag e red-en dra c'hell caout halan ha divesker a ziaben dezhan. Neuze e teujont d'al lo-chen cazel oc'h cazel.

El lochenpa divar dro ne gomzet nemet euz a Donic. Euruz oa, a lavaret he dad en doa bet chans. Cals tadou ha mamou a garje e vije bet ho bugale e leac'h ar mes- saer bihan.

Pastour gouscoude n'oa ket labuen. Clevet a rea dia- larzhenna eur vouez o rebec'h dezhan ar pezh en doa great, ollavaret dezhan e tlie eun buguel beza e kichen he dad hag he vam, hag o teuje Doue marteze d'her skanla lamduz m'oc'eat e nep he volontez o rei he vap eun caout eun hebert eun kaout. Evit moug ar vouez-ze e lavare: aze dezhan he unanvez da mui d'ad hag a reas he vellec'h gaoz evite vad eole casse evelse he vap da chounit he vara.

Ar roue ar messaer Bihan a wone lezet da vont en hent. Arbottedigou euz an amezeguez a iez eur pennad dihe ambroug hag oll o doa avit d'uthan; oll o divije ca- ret mont d'ad redel bro. Tonig en doa kement a vall da vellec'h hec'h rei caer a gave dezhan, ma n'en devoa eus lavaret tam nec hamant o tispertia dioc'h he d'ad.

Ar roue mont en hent gouscoude oa bet o lavaret ke- navez d'ad ar roue Person. Ar beleg mad a ioa daelou en he zoulagad. Kenavezo, va map, emezhan; Doue d'ho reno ha d'ho miro dioc'h pep droug. Daoust petra zigouezo ganeoc'h, ma ancounac'hait marse d'he bidi. Dale hit madato d'ho lealdet ha d'oc'h honestis. Ho pet souche gueleit he mervel evit pec'hi; Douetuz ec'h em gafot alien ne danjer, gant tud ha ne roint ket a skuier vad deoc'h. Me garje em bije gallet miret na vijac'h en em gavet en danjerou-ze. Collet em eus va foan. Siouas! pebez beac'h a guemer aze ho tad var he ziouscoaz!

Tonic n'en doa ket comprenet cals a dra euz ar pezh a lavare dezhan ar beleg. Divezatoc'h avad e teuas da zouch dezhan euz ar c'homzou-ze pa en em gavaz en nec hamant, hag e rejont cals vad d'he galon.

(Eur pennad all eur wech all) G. M.

Euz re vourrou n'ho lous.

Ar roue o veza, bet treac'h d'ar Zaouen e-kichen Douarnenez, e tiguwezaz d'ezhan ober eur banvez euz ar seurt he oc' gwelet nag ar aok ha goude; ha tuchentil ar vro hag ho zad a oe pedet gant ar roue da zont d'al lez. Berec'hed avad ne oc ket pedet, hag e ranko choum he- unanik er gear da ober lereier d'ar beorien ha pidi santez Berec'hed.

He c'hoarezed a ioa bar ho levenez, na petra'ta: mont d'ar palez, ober banvez, dansal dirak ar roue hag he vap; n'oa ket bihan dra oa.

Ha kaset a reaz-te mont d'ar palez, eme-z-ho da Verec'hed. He c'hoarezed ebad d'e-hoc'h ober goap ac'ha- noun, a lavaraz Verec'hed; ne ket-se eo a fell d'in. — Te lavaraz, he c'hoarezed, mar d'afez di ne ve den evit miret da n'hoarzi.

P'oe deut deiz ar banvez, ann oll a iez kuit enn eur c'harrad, o tad, mam hag ann diou verec'h. Ne dal lavaret ez edont enis ho c'harter. Ha mont Verec'hed neuze d'ar c'halatraz eun diore hampric ha skanlla daelou.

He maerounez neuze a c'houlenn out-hi diwar-benn

petra e doa doan: me garfe emez-hi, me garfe so n'oa ket evit lavaret petra e bed ken, ker braz oa he c'hoar- lonn. — Te garfe mont d'ar palez, ha n'eo gwir? eme ar vaerounez, eur gorrigez leal ha mad. Mont a reas med fell d'id senti ouz-in. — Petra vo da ober, eme Verec'hed?

— Nemeur a dra, eme ar gorrigez: mont d'al liorsik, kutuill ha paka eur sitrouillezenn ha digas anezhi ama.

Hag ar fillozez mont dioc'h-tu d'al liorsik ha paka eur sitrouillezenn ar gaera ha mont goude da gaout he mae- rounez. Hou-ma neuze o sevel enn he sa, a gemer he gwialennik: dre c'halloud va gwialennik, eme-z-hi, me a c'hourc hemann d'ar sitrouillezenn mont e karrons. Eun eunn taol krak ar sitrouillezenn a oc lekeat e kar- rons euz ar re gaera. — Te zo e tro brema da vont d'al lez, eme ar gorrigez. — C'houi lavar a-walc'h, maerounez, a kezek da denna ar c'harrons. — N'oc ket pell ar gornadounez a c'halvaz seiz logodenn d'he c'haout, ha rak-tal ez ejont da gezek.

Gwisket e oe Berec'hed evel eur brinsez, ha kaset d'an palez enn eur c'harr seiz marc'h out-han. P'oe arriet ar c'harrons, map ar roue a zeuz da ambrouk ar brinsez, da vont gant-hi er zal vraz ma z edo ann dud o tansal ebarz.

(Eur pennad all eur wech all) Tennet euz a VIGNON AR VUGALE.

A. TROUDE.

(Eur pennad-all eur wech-all.)

Kuzul d'an Tadou ha d'ar Mamou.

En eur barrez, ha n'e hanvign ked, Job enn devoa eur map, eur penn-her hag a garje ha greiz he galon. Epad 30 vloas he devoa deuet didrouz ha dizinkan gant he c'hreg. En kaon dezhi oa bet pell, ha brema n'hen devoa ken c'hoant nemed da zimzi mad he vap. « Bez tur, bev didamall, emezhan, ha pa gavi eur vouez da blijoud did, lavar dign: hag e fors pe gher bras argoulou a vezo goulened diganez, men a roio did hag he ve va oll madou he ve. »

Hoghen, enn eur barrez all e kichen, e choma tri breur: unan anezho a ioa ive intaon ha n'hen devoa nemed eur verc'h. Plijoud a reas ar verc'h da vap Job. Ar goulenn a oe great, ha selaoued he one. Ne oa izom- ken nemed deus eun tam reiz divar benn ann argoulou.

Job enn devoa pevar shand scoed leve ha daou vil scoed en arc'hand, hag cuspen chatal mad hag ar re- beuri d'eus ar guella.

A greiz he galon e roe dioc'h ann anter d'ha vap, rado ho toui lezer ann nemorand goude ha varc Job, eme ann tri breur, n'he ket-se a fell deomp. Herrio he touet lezer, goude ho maro, ann hanter all d'eus ho peadra mo- d'ho map, hag a feiz vad emac'h, ni ho kred; Mes ac'han di, c'houi a hell trei ha beza dizhenvel, hag a benn ann dilosd ho pugale yian n'ho devezo netrac'ho.

Evit peur-ober ann taol ann tri breur a c'houlenn m'a roje Job d'he vap he oll vadou glass: ha seac'h ha ma ne raje ket-se n'he daje ked ar stal da benn.

Ar paour keaz Job a grene avoalc'h ; diez bras he cave discreghi d'eus he oll vadou : diez eo mond eus a binvidic da baour. Mes kemend he carrie he benn-her m'a aotreas evel kend : ha dirag Naoter ha testou e tiserogas d'eus he oll vadou hag ho roas evit biken d'he vap ha d'he verc'h-kaer.

Ann eured a oue gread, hag a benn eur bloas e c'hannas d'ann daou bried iaouank eur bughel pehini dre m'a c'heia enn oad a ziskueze eur skiand hag eur furnez dreist muzul.

E keid-se ar paour keaz Job a veve guella ma c'helle e ti he vap hag he verc'h-kaer. Enn dervechennou kenta oar bed leun a garantez evintan, mes abaoue eus bloas ha tremen, ha brema eo ienned ar galoun. Gouzanved he veze c'hoas evel kend abalamour m'a c'helle gounid he damic boued o vessa, pe o relachi ar zaout, pe o cass ar c'hezeg da arat. Mes gand ar gosni e teu ar c'hlenvejou : abarz neubeud ar paour keaz Job a deuas da veza louz ha cheinus. Breman er c'haver a re e pep leac'h : Ar c'hreg dreist oll, grons ha rok, n'he oa ked evid er gouzaon. Bemdez he c'hlevet ho lavaret d'he goas he tistroje da di he zad ma ne vije ket kasset kuit.

Kement ha kement a reas var he goas ma teuas eman ar map dizanaoudek ha digaloun-man da lavared eun dervez d'he dad clask, a benn an nos, he lojeiz el leac'h all.

« Petra leverez, va map paour, eme Job oc'h en em estlami ! O va Doue ! Roed em beus did ann oll vadou em beus ghelled destum epad 60 vloas ; abalamour da-ze he maoud herrio enn da eaz, ha breman e fell did va c'hass kuit ! Hag evelse eo he paez ann oll garantez em beus bet evidot ! En hano Doue, va map, n'am lez ked da vervel gand an naoun enn eun tam cougn-tro benac ! Gouzoud a rez, n'he oun ken evid bale mui : ro dign ebken eun tam cougn benac eus d'ha di ! N'he c'houlennan ked digan-hez nag eul loden deus da bred nag eur gouele da gousked : eur guchen golo e craou ar zaout, eun tam bara zeac'h a dour e-hars toul ann or a zo avoalc'h evidon. D'am oad-men eo red kenn-neubend evid beva ! Hag ous-penn gand va c'hosni, va c'hlenvejou ha va glac'har n'he zalein ked da vond da Varados an Aotron Doue.

« Ma n'ha c'heus izoum, evel pep christen, da ober ann aluzen evid kaoud digant Doue ann distoll deus da bec'hejou, mad, gra-he-hi da tad, n'eus ket eun aluzen guirroc'h. Dalec'h kount mad pegement a boan em beus bed oc'h da zevet epad 30 vloas ; dalc'h kount ive er gwestlou kaer enn deus gread Doue d'ar vugale a benor ho zad hag ho mam, ha kemer aoun rag mallos Doue m'ar teuez da veza muntrer d'ha dad. »

Ar c'homzou-man a ieas bete beo kaloun ar map : mes evel kent enn devoa aoun rag kassoni he c'hreg : mouga a reas karantez he galon, hag evid kaoud ar peoc'h enn he di e c'hourc'hemennas d'he dad mond enn he hent.

« N'ha da beleac'h e fell did e c'haffenn-men, va

« map keaz, eme Job ? Ann estren hag int-hi a raio dighemer din-men, men sclapped er meaz deus he di gand va map va hunan ? N'em beus ked eun diner em godel : red eo dign eta goulenn herrio eun tam bara eun aluzen dindan boan da vervel gand ann aoun ! « Couls goude guech-all men a ioa pinvidic ! »

Epad m'ha comze e veled ann daelou o reded puill var he jotou roufenned gand ar gosni ha gand ann encrez. Evel ato soubla a ra da zestum ar penn-baz var behini he c'harp he gosni hag he doc'horriligbez ; diharpa a ra deus ar-skaon oc'h pehini e oa harped ha mont a ra enn he hend en eur bedi Doue c'hoas da ober trugarez d'he vap.

En em gaved var ann treujou e tistro c'hoas eur vech deus he vap, hag e lavaras d'ezhan : « Tremened eo gouel Mikeal, va map, arru ar goan bras, ha ma lez Doue huez gan-hen bete neuze, n'em beus tam dillad evid arzall dioc'h ar riou. Guelet a rez, ar pez a zo enn dro dign ne dint nemed truillou : enn anaoude-ghez vad da viana deus ann dillad brao em beus roed did guech-all, ro dign herrio, va map, eun tam deus d'ha zillad : n'he c'houlennan digan-ez nemet ar pep-falla, ar pez ne deo ken mad did d'ha hunan a zo mad avoalc'h evid oun-me. »

Kement-ze, oh ! tra griz meurbed ! a oue c'hoas dinac'hed onta ! Ar c'hreg a zoroc'he hag a lavare ne oa enn ti tam dillad ebed evintan.

« Da viana, eme ar paour keaz Job, » he galoun rannet hag ann daelou o reded puilloc'h c'hoas var he zremm dourlived ha divoeded, « da viana ro dign, va map, ro dign unan eus ann daou ballen e c'heus da lakad var d'ha ghezec. »

Ar map, pe gounezet he galoun, pe o velet n'he oa ked evid dinac'h kenn-neubeud deus he dad, a c'halvas he baod, hag a lavaras dezhan mond d'ar c'hraou da glask eur pallen-marc'h evid rei d'he dad coz.

Kaloun ar c'hraouadur-man a ioa beed tenerreadio veled hag o klevet kimiad he dad-coz, rag, er lavared em beus deoc'h, leun a furnez hag a skiand oa dioc'h he oad.

Mond a reas var eeun d'ar marchosi, kemer a reas ar guella deus ann daou ballen, henn trouc'ha a reaz dre ann hanter, ha digass a reas eun tam d'he dad-coz.

« Oll eta, eme ar paour keaz Job, » en eur difrouka goassoc'h goaz o velet he vap-bihan o tinac'h outhan ar pallen enn he bez, « oll eta o deus c'hoand d'am guelet o vervel ! Va map kris enn devoa roet dign ar pallen enn he hed, ha cetu va map-bian oc'h er lamet an hanter digan-hen ! »

Ar map ne hellas ket miret da c'hourdrous he vughel abalamour n'hen devoa ket sentet ountan penn-da-benn.

« N'ha perac va gourdrous, va zad, eme ar bughel ? « Men am beus diskredet varnoc'h ho poa c'hoand da laza, abars nebeut, va zad-coz, hag em beus kennerzed ac'hanoc'h. All loden all deus ar pallen n'he vezo ked kolled, rag enn dalc'hed em beus evit e rei deoc'houi oc'h unan, va zad, pa vezoc'h deut da veza coz. »

« Ar map a zounnaz ho klevet eur rebech ker c'hoero : ha vughel enn devoa piket ha skierreat he galonn, Koeza e reze hars-troid he dad, goulenn a reas trugarez digan-han, kregit a reas enn he zorn, her c'hass a reaz de abichen ann tan, hag a c'houdevez, n'her loskas da d'he dad. »

ALAN.
LEVR AL LABOURER.
« Blij hag a zispilj d'ar gwenan. »

Na blantit tost d'ezho nag eur wezen ivin,
Nag eur wezen coat-croas, nag eur wezen sapin.
Gwaskeken ar gwez-ze re deo ha re deouel,
N'ar gwenan iaouanc so noazuz ha marvel. /455
N'ho likit ket ive, na re dost d'eur vogher,
Na re dost d'eur vouillen a dot eur blas pouner ;
Na re dost d'eul laghen, na re dost d'eur poull doun ;
Nag al lec'h ma clever ann trous euz ann dassoun.

Tro-war-dro d'ar c'hestou na vo med bokedou, /446
Nemed gwez goloet a bep seurt bleuniou.
Me garte-me guelet ar parcou a bep tu,
Goulen evel eul liser, gand ar bleun guiniz-du :
Pep menez goloet a vrug gand ho c'hleic'hier ;
Er prajou o sevel meur a voked tener, /445
Eul briscoad nemeur stanc, mes carget a louzou ;
Eul hors pourvezet euz ar c'houeka bleuniou.

Eur rusken plous segal, gant pluscad drein griet
A blij d'ar wenenan : ha d'oc'h cals ne goust ket.
Stouff gant pri-melen ann traoun euz ho zier : /450
Ha na lezit gant ho med eunn oric dister.
Ar mel a ve guelet o scourna pad ar goan,
Ha lies o teuzi gant ners an heol d'ann han.
O houeta da bep couls, tomm pe ien ann amzer,
Da viret ho kwenan a lakaio preder, /455

Setu perag ive e teuont peb unan,
Da stanca gant coar blod ar faoutou disteran.
Goudeze e ledont tro-war-dro d'ho c'hestou
Ar pez ho deuz cavet war ar bleun, ann deliou ;
Hag e vront ive, e goueled ho rusken, /460
Gand a stag vel ar peg, n'ar ha n'em asten.

M. B.
Hano ar Zent evit ar Sizun-ma.
Epad ar sizun-ma e ra an iliz ofis eisvet Pasc.
DISSUL 28 EBREL. — Sul fasc vian, pe ar sul kenta goude Pasc.

An Abostol hirio :
« Va breudeur, kement o deus Doue evit tad, a drec'h ar bed, hag ar victor-ze treac'h d'ar bed eo hor feiz. Plou eo a drec'h ar bed nemet an hini a gred eo Jesus map da Zoue ? Ar memes Jesus-Christ eo so deut d'hor goalc'hi gant dour ha goad ; ne ket gant dour epken, mes gant dour ha goad. Hag ar speret eo a rent testienn ez eo Jesus-Christ ar virionez. (Da lavaret eo Jesus

o lacat he speret etre daouarn he dad en eur vervel, a ziskueze e voa den).

Rag tri a zo hag a rent testienn en Enn, an tad ar goms, (ar map) hag ar Speret-Santel, hag ar tizezenn eur memes tra. Ha bez ez eus tri hag a rent testienn an douar, ar speret, an dour, hag ar goad, hag ar tizezenn so eur memes tra. (A rent ar memes testienn). Ma recevomp testienn an dud, testienn Doue a so brassec'he Hoguen Doue he unan en deus roet an testienn bras-ze da Jesus-Christ o lavaret oa he vap. An nep etara gred eo Jesus-Christ map da Zoue, en deus testienn Doue enha.

Kenta lizer Sant Ian. V. 4. G.M.

KELEIER.

An aotrou Naissant, person Huelgoat, so hanvet person Castelnevez.

An aotrou Treguer, person Hanvec, so hanvet person Rumengoll.

Etouez ar veleien a zeryich var ar mor, e cavomp an hanoniou-ma :

An aotrou Saout a so kendalc'het var al listri a ia d'ar C'hoichin ;

An aotrou Millour a die mont var an Inflexible, Testi scol evit ar vousset ;

An aotrou Hellard hag an aotrou Oullivie so hanvet beleien a vor eus an eil clas ;

An aotrou Hellard so hanvet beleg hospital Pors-Lois.

Lavaret a rer e vezo roet mouezion evit nevez eul loden euz ar c'honseil jeneral ar trivec'h hag an haonteg a viz mae.

Evit ar redadegou kezeg a die beza e Montroulez ar pevarzeg hag ar pemzeg a viz gouere ez eus da rei e prizioù nao mil pemp cant lur.

Ar c'honcours evit ar chatal lard e Korhaes, evit departamaouchou Finister, Costez-an-Nord ha Morbihan, a vezo d'ar pevar a viz even.

E foar Roazon, ar c'henta ebrel, e voa nebeut a guezeg. Ar foar so bet laosk var an ejennet hag ive var al loenet all. Nebeut so bet guerzet.

An ed so eat var gueraat er sizun-ma. An vellaen ne ket braz, eme Gazeten ar meziou, mes ne deo nemet suroc'h aze da guenderc'hely dreist oll o veza ma zeo deut goude eur c'hourenadeg stard avoalc'h. E cals lec'hioù en em glemer euz an amzer. Aoun zo n'en defe great ar ienien so bet droùg d'an costou hag ive d'ar bleun er guez frouez.

Epad ar bloas 1865 ez oa bet laket er post, e Frans, 341,095,000 lizer. Post Paris a receo bemdez var dro

mil lizer ha ne aller ket lenn an *adres* varnezho. Eno ez euz daou zen, boas dioc'h ar vicher-ze, hag a deu abenn da *zivinout* an *adressou* scrifet fall-ze. Var dro eun antercant bemdez a jom gouscoude ep ma c'helfent ho divinout, hag ar re-ze a vez taolet a gostez, evel ive ar ren'int ket bet recevet gant ar re ma voant scrifet dezho. Cals liziri a jom evelse ep beza recevet, hag a zistro d'ar post defot beza bet *afranchisset*. Evit eta beza sur ez ai al lizer d'an hini ma scrifer dezhan, e tleer *afranchissa* ha scrifa mad an *adres*.

Beach eur Missioner. — Er sizun catolic a Seez e caver eul lizer scrifet gant an aotrou Feron, missioner e Coree, d'he vam, d'he vreudeur ha d'he c'hoarezet. Merca a ra dezho an trubuillou en deus bet epad he veach.

Clevet o poa, me oar vad, emezhan, hano euz an darvoudou digouezet gant hor Mission, e Coree, hag o pezo bet aoun braz abalamour din. Siouas ! An Aotrou Doue n'en deus ket va c'havet din da veza merzer, ha setu me, en despet din, er meaz a zanjer, mes ive er meaz euz ar C'horee, euz ar vro baour-ze a garan kement. Peur e c'hellin-me distrei dezhi ?

An han a voa tremenet didrouz avoalc'h ; ne allemp ket avad en em ziscoez, nag ber netra. Ne allemp ket zoken cas ho zacranchou d'ar re glan na lavaret an oferen an anter euz an amzer. An Aotrou Ridet a ioa eat d'ar Chin da gas ar c'helou euz an hiskin-ze. An amiral Roz a falvezas dezhan dont dioc'htu d'ar C'horee. Hoguen Doue ne fallas ket dezhan, hag an Amiral a recevaz urs da vont d'ar C'hochinchin. Gouscoude ar c'helou-ze a ieas bete Pekin, hag eur c'hannad a voue casset e cuz da Roue Coree evit lavaret dezhan pe seurt sonch en doa bet an Amiral. Kementse a lakeaz ar strafuil etouez oll dud ar c'harter. Ar rejant avad hag he likizien a ieas muioc'h mui e counnar, hag a roaz urs da laza an oll gristenien, ha dreist oll ar visionerien. Guella pezh zo ar vandarinet o devoa aoun, hag a glaske pep seurt digareziou evit chom ep senti oc'h an urs-ze.

An eil avis guengolo eul lestric tan a Vrozaoz, hag a voa enha pastoret protestant o clasc dont e Coree, a reas pense var an aod ama. Ar rejant, en he gounnar, hag ep sonjal e rea gaou outhan he unan, a lakeas laza kement a ioa var al lestr-ze. Goudeze e rea he fougue evel pa en divije trec'het an Europidi en eur stourmat. Hoguen ar c'harteriz n'oa ket re a fougue enho, hag ar rejant ne ket bet pe llken nebeut ep discana.

En derveziou diveza a vengolo eul lestr brezel a Frans ha daou lestr all bihanoc'h a ieaz varzu kar benn ar C'horee. Muia ioa gallet a vagou a voa destumet evit ober eun arme vor guest da ober aoun d'ar Fransizien. Eun tenn canol epken en deuz ho c'hasset oll en ho zro. Diou vag so bet draillet, hag ar re all da dec'het kuit mar gouient. Biscoas n'o doa clevet eun hevelep trous, na guelet eun hevelep freuz. An Aotrou Calais a ioa var an aod, rag he gasset em oa di evit ma zaje d'ar Chin ha ma pellaje dioc'h an hiskin. Pa deuaz ar c'heleier-

ma din ez iz en hent evit mont d'he gaout ha mont gantha beteg listri Frans. Edon daouzeg leo dioc'h ar mor. Diblas a riz e creiz an noz, hag e valeen a drenz ar geot hir ha gleb gant ar gliz, ha va dillad a voa gleb ive pa zigouezis var an hent bras. Neuze e teue ar boultren da staga outho, ha n'em oa nemeur an ear euz eun den honest. Daou gristen a voa ganen. Eur paien, eul laer, a evesseaz ouzomp, hag a deuas var hon lere'h. Her guelet a rejomp o vont en eun hostaliri, eur vordel, hag ac'hano e tenas gantha daou all evelldhan, hag en em lekejont da redek evit hor paca. N'oa ket dies gouzout e pe zonzh emedont. Edomp neuze en eur blenen eleac'h n'oa ket eur bot keuneut. Gouscoude en eur c'horn pleg a rea an hent, eur paien mad a voa o labourat hag a vele petra dremene, a lavaras deomp eu em guzet etouez eun nebeut guez pin iaouanc a voa eno. Senti a rejomp outhan, gourvez a rejomp eharz ar plantennouigou ber-ze, ha Doue, pehini a ell cuzet he zervicherien gant guiad kinid pa gar, hon difennaz evelse oc'h al laeron-ze. Eno e chomjomp cuzet bete'n noz, ha neuze ez ejomp d'ar gueriaden gristen eleac'h ma edo an Aotrou Calais. Ep dibri tam e tiblesjomp dioc'htu da vont da glasc ar vag ; hoguen caer on devoue, e tigouesjomp re zivezad, hag e voue red deomp tremen an noz er vag eleac'h ma crenemp gant ar riou o c'hortoz antronoz vintin. Casset em oa en ho zro ar gristenien a voa deut d'am heul, ha vardro nav heur e c'heljomp en em lacat en hent evit mont etrezeg listri Frans. »

Listri Frans a ioa eat kuit, hag ar visionerien en em gavas re zivezad. Goude beza bet eur pennad mad dre eno o vont hag o tont, goude beza bet meur a vech tost dezho coeza etre daouarn ar baienet, ec'h eljont digouezout e Chin eleac'h m'emaint o c'hortoz caout an dro da vont adarre d'ar C'horee. G. M.

PRIZ AN EP.

KEMPER. — 15 Ebr.		PONT'NABAT — 11 Ebr.	
<i>Priz ar c'hant lur.</i>		<i>Priz ar c'hant lur.</i>	
Guinis.... 15 lur, 32 c.	Segal..... 9 lur, 60 c.	Guinis.... 15 lur, 63 c.	Segal..... 9 lur, 48 c.
Eiz..... 9 lur, 80 c.	Ed-du.... 7 lur, 23 c.	Eiz..... 9 lur, 38 c.	Ed-du.... 7 lur, 40 c.
Kerc'h.... 8 lur, 54 c.	Avalou-douar 4 lur, « c.	Kerc'h.... 9 lur, 25 c.	Avalou-douar 4 lur, « c.
MONTROULEZ. — 6 Ebr.		BREST. — 15 Ebr.	
<i>Priz an hectolitr.</i>		<i>Priz an hectolitr.</i>	
Guinis.... 23 lur, 78 c.	Segal..... « lur, « c.	Guinis.... 25 lur, 04 c.	Segal..... 23 lur, 56 c.
Eiz..... 42 lur, 65 c.	Ed-du.... 43 lur, 34 c.	Eiz..... 43 lur, 98 c.	Ed-du.... 44 lur, 29 c.
Kerc'h.... 9 lur, 49 c.	Avalou-douar 6 lur, « c.	Kerc'h.... 40 lur, « c.	Avalou-douar 8 lur, 40 c.

Ar Gerant: AR. DE KERANGAL.

Kemper, moulet gant AR. DE KERANGAL, Moulet an Escopi.

FEIZ HA BREIZ,

KLOU A BEP BRO, HA KENTELIOU VAR BEP TRA

DIGASSET BEP SUL
Da guement Christen a goms ar brezouneec.

Ann Abonnamant d'ar Gazeten a goust:
 Evit eur bloas..... DAOU SCOUET.
 Evit tri bloas..... EUR SCOUET.
 Evit tri miz..... C'HUEC'H REAL.
 Eur gazetenn ebken..... DAOU VENNEC.
 Ar bazamant a dle beza great araog caout ar gazetenn.

KEMPER, 27 Ebril 1867.

An dud dileiz so red dezho avechou anzaou guirionezou hag a dileont caout tenn da ziscleria a vouez an oll. Gouscoude ne ellont ket miret avechou da renta testeni d'ar pezh dremene dirag ho daoulagad. Evelse, o velet an ingroez allud a vez e pep leac'h epad ar c'horaiz o silaou ar pizeguenhou, o tostac'oc'h ar zacranchou, dreist oll er c'hœriou braz, eur scritagner ha ne deo ket dra zardouguet evit ar Relijion, a lavare en derveziou tremenet.

An ilizou eleac'h ma zeus cals tud, a deu da veza reanize pep leac'h. Ne gomzomp ket euz an derveziou goude, gomzomp epken euz an derveziou ha n'eus ket eilio ouisou caer, piou a ell nac'h ez a bep bloas var gresc an niver eus an dud a zarempred an ilizou ? ha ne velit hu ket peguement a voazed a veler ouспен ar merched ? Er penn kenta euz ar c'hanvet-ma e vije eur burzud guelet eur goaz en iliz (er c'hœriou); hirio e ve eun abaden all ma ve red ho niveri ; ha ne deo ket a dra str eur goumit bihan evit ar feiz hag ar relijion guelet ar voazer o vont evelse d'an ti a beden.

Bez'ez eus c'hoas nevezintiou-all souezussoc'h c'hoas marleze. Guelet er scolion, en armeou, scolaerien, soudardet o tiskuez ho feiz dirag ann oll ; guelet, er c'hœriou braz, barnerien, medecin et oc'h ober, ep mez ebet, ho oll deveriou a gristen.

Ma vije eundra bennag da c'hounit oc'h en em ziskuez tud a relijion, ma vije esper da ober vad d'he dud o tarempred an ilizou, neuze ne vije nemeur a dra da lavaret evit guelet hiniennou o vont alies da di Zoue, o tostac'oc'h ar zacranchou. Hoguen ne ket evelse ema ar bed, hag hirroc'h a c'hounisset hirio oc'h en em lacat etouez ar *francmasonet* eguet oc'h en em lacat etouez breudeur sant Visant a Baul. Bez'ez euz, ep mar, hiniennou ha ne dint devot nemet a hano ; ato ez eus bet, hag ato e vezo. Gouscoude, dioc'h ma za ar bed hirio, evit mont d'an iliz, ez eo e guirionez red caout izom da bidi Doue.

ALIOU.
 Ar scrijou a ve c'hoant da lacat er gazetenn a dleer da adressi oll d'an Aotrou MORVAN, Beleg e Kemper.
 Ar paemanchou a dleer da adressi d'an Aotrou SALAUN, ebken. An abonnamant a guemere e titl an Aotrou SALAUN, librer, ru Kereon, e Kemper.

Lavaret pep hini ar pezh a garo, elasket an digareziou a garo, red mad eo anzaou hag anaout ez a eun hon amzer ar Relijion gristen var c'hounit.

Bez'ez euz a hent all eun aronez, eur merc'hanat e c'hounit ar relijion. Euz an teir vertuz a zell oelh Doue, an diessa da ober neuz d'he c'haout eo an hini a ra deomp digueri hor ialc'h ha ranna hon danvez gant hon nessa. Hoguen goulennit digant an dud a iliz, hi penseso carguet dreist oll euz ar beorien ; goulennit digant ho mad oar hirio da rei ; ha ne deo ket cousket, hoc'h ar garantez evit an dud izomec ? Goulennit digant ho ne zao ket bemdez creoc'h ar vertuz-ze ep eneo zo, hag an eneo-ze eo ive dres ar re a zihun muia enho, ar zantimanchou christen. Goulennit digant ho dre fougue eo e roer an aluzen, ha ne deo ket dre guz er c'hontrol eo e roer dezho an darn vuia euz an aluzennou a dremen etre ho daouarn ; ar pezh a ziskuez sclear eo ar feiz epken a laca ho rei. Bez'e c'heller ep mar rei, ha rei cals, ep caout feiz : gouscoude ar guir garantez ne oufe nemeur beza dispartiet dioc'h ar feiz hag an esperans ; An teir vertuz-ze so teir c'hoar. An hini so mad da rei a gred hag a esper ive. »

Setu aze penauz e coms tud ha n'o deus nemeur a feiz nag a relijion. Diskuez a reont ez eo ato an iliz santel leun a vuez, hag eleac'h beza discaret gant he enebourien, e sao ato skedussa oc'h skedussa, hag an niver euz he guir vugale a gresc ato, ne ket epken e niver mes ive e carantez evit Doue hag an nessa ; ar pezh a zo ar merc' guella evit anaout eur guir gristen.

Rom. — Ne deus carter ebet var an donar eleac'h ma cafe ar gristenien kement a ezamant da ober ho zilidiguez evel a gavont e Rom. Evelse, er c'horaiz e roer retrejou, hag an hini a gar a ell evit netra, tremen enho eun derveziou bennag evit en em lacat e stad da ober he base. Mar deus meur a dra oc'h ober nech d'ho Tad Santel ar Pap, ez euz ive traou all hag a ra plijadur vras d'he galon a dad. Ha pa na ve nemet ar merc caer-

ze a garantez a roer dezhan euz a bep corn euz ar bed o cas dezhan zouavet evit he zervich, kementse a zo avoale'h evit renta cals scanvoc'h ar beac'h en deus da zouguen.

Etouez ar belerinet so bet e Rom er miziou diveza, e comzer euz eur plac'h paour, eur gueguinerez, euz an Holland, a so bet o pidi var beziou an ebestel Sant Per ha Sant Paul. Ar plac'h-ze a voa bet clan, hag e doa en em voestlet da vont da Itron-Varia-ar-Salet, ma teuje da veza pare. Parea a reas, mes ancomac'hat a reaz ive ar pez e devoa goestlet. Doue a zigasas da zonch dezhi o rei dezhi poaniou braz a gorf hag a speret. Neuze ne vare'hatas ken, hag en em lakeaz en hent var droat evit mont d'ar Salet. Digouezet e traon ar menez, evithi da veza scuz, evit beza ma voa ien ha ma rea glao braz, e taolaz he boutou hag e savas diarc'hen da gaout ar chapel. Ar vaouez, ouспен ne voa ket iac'h, ne deo mui iaouanc, rag triquent vloaz e deus. Coeza a reas meur a vech araog tizout kern ar menez, hag e tigouezaz he zreid blonset ha leun a c'hoad; mes hec'h alon a voa leun a levenez.

Kement ha beza deut en hent, ar plac'h-ma a fellas dizhi mont ive da bidi var beziou Sant Per ha Sant Paul, ha setu hi en hent da vont da Rom. Digouezet eno, he oll c'hoant e voa gulet ar Pap. An Aotrou Merod a reas dezhi gulet an tad santel. Neuze e lavaras outhi he unan: mad, red eo din mont da drugarecat ar Vere'hez euz a guement all a c'hrasou; ha setu hi da Loret. Distro da Rom ez a da drugarecat an aotrou Merod a so euz he bro. An aotrou Merod a lavaras dezhi: « keguinerez oc'h, a gredan; mad, me ho talc'h em zervich evit ma reot din va c'heguin eguis va bro. — Oh! nag hen so mad an Aotrou Doue, a lavare ar gueguinerez coz! Goulennet em oa digantha ma roje din evit mestr eur beleg mad bennag, ha setu e ro din eun anc'hescop! Evelse ema; goulennit digant Doue keit hag ho pez, hag e roi deoc'h keit hag ho preac'h. »

Nevers. — Eur protestant a zo deut er zizun dremenet d'en em ober catolic, eme *Sizun Nevers*. Dirag Person ar Gatedral en deus troet kein d'he fals credennou. Er memes devez eo bet badezet hag en deus communiet. An den iaouanc-ze, oajet a bemp bloas varnuquent, en doa c'hoant pell a ioa da guitat an errol evit caout ar virionez er guir ilis. Goude beza studiet ha evesseat mad petra dlie da ober, ez eo anezhan he unan distroet oc'h Doue.

Missionou. — Eur missioner abostolig euz an Enez-Bourbon, a scrif ar pez zo ama varlerc'h da gazetenn Itron-Varia-ar-Salet:

« Bez'ez euz em farrez eur vaouez ha ne alle ket finval he breac'h cleis nao bloaz a voa. Ar vreae'h-ze a ioa evel pa vije distag dioc'h ar scoaz; an nervennou o doa collet ho ners. Kement a boan e doa er vreae'h-ze ma ranke he dele'her ato var bouez eur mouchouer. E mis du 1866, e teuz eur c'hlenvet languis dezhi var

ar mare had. Ar glanyourez a ziouske kement a boan, ma zea toc'hon ha ma colle he anaoudeguez avechou. Ne elle dibri tam; eur boan dispar e doa zoken o lonka eur veraden zour bennag.

Recevet e doa he reiziou; ha caret e divije mervel, hogueu leun ocaizentidiguez oc'h bolontez Doue. Dinersa oc'h dinersa ez ea bemdez, hag evel ne varve ket, e teujot da zontall en doa Doue eur zonch bennag varnezhi, hag e voque aliet da ober eun navet da Itron-Varia-ar-Salet.

Comans a reaz an navet-ze ar pemzeg a vis kerzu, hag e prometas en em roje d'he zervich e chapel Itron-Varia-ar-Salet, ma teuje da veza pare ha divac'haign.

Bemdez epad an navet ec'h efe dour euz ar Salet hag e lavare eur beden bennag. Kerkent e velleas dezhi, hag abenn fin an eivset e voa pare tre. Abaoue e labour gant he daou zorn, e ra a bep seurt labourou, hag ez eo ker iac'h ha pep'hini. »

Chin. — An Aotrou Mouly, Eskop Pekin, en deus digoret he Gatedral nevez ar c'henta a vis guenver tremenet. Eun iliz eo euz ar re gaera. Ep dale oc'h esperomp en devezo Canton ive he Gatedral evel ar gear benn, hag an Aotrou'n Escop Guillemm a ello ive beniguen ha digueri he ilis caer da gristenien he escopti.

Shang-Hai en devezo ive ep mar he dro ne vezo ket pell. Chapel an tadou Jesuisted a zo eat cals re vihan dioc'h an niver a gatoliked a so eno brema. Ar vugale baour hag ar vinoret kez destumet gant an tadou a Gompagnunez Jesus a so en eur gueriaden var ar meas tost da Shang-Hai, hag a so seis mil anezho. Eno e teskont dezho ho c'hreansou, ho lakeont da zeski eur vicher bennag, hag ar re anezho o deus speret, e roer dezho eun descadurez hueloc'h, evit ma c'hellint sicour gounit eneo da Zoue.

E Chin ez eus nevez maro eun den gouezic guinnidic euz an Itali, eleac'h ma voa bet professor e ker Turin. Eun den difeiz eo bet, unan euz ar re difeisa, hag ar guelennadurez a roe d'ar re a veze er scol gantha a voa ato a enep ar relijion. Mad, maro-eo e guir gristen. Goulennet en deuz he unan ar sacramanchou, ha n'en deus ket gortozet ar mare diveza evit ho goulenn. Var guementse eun itron a lavare: « Beza difeiz, emezhi, a so mad evit beva; mes evit mervel eo red mad beza guir gristen, beza catolic. » G. M.

BUEZ SANT PAUL.

(Pemped pennad.)

Setu aman penauz Withur a n'em guemeraz evit lacat Paul da zont da veza Escop: Mont a reaz eun deiz da gaout ar Sant hag e lavaraz d'ez-han: « Me, emezan a zo nec'het braz. Childebert, roue a Frans, en deuz a va laket da houarn ar beg-douar-man: hoghen bre-man e n'em gavan en eur goual guden; meneg eo da lemell va oll vadou euz adre va daouarn, ha d'am te-

leur var ar holo. C'hai ebken a hell diluia ar guden-... euz ar roue a Frans, ha dreist-oll gand ar gouarnour Withur. Guech-all Paul, pa n'edo hoaz nemed beleg, a labour e he c'hoalc'h evit gounit e-neou da Zoue; mez deut da veza Escop, e labour gand muioc'h a frouez, rag m'en euz reseret eur c'hras muioc'h; en he gonscrasion a Escop. Tachennadou mada...

zouar a ioa hoaz neuze e Breiz, hag e vije adoret en ho an doueou pe an idolou. E Ponthusval, en dro da Venham, d'an Treaz, d'an Teven ha zoken e Guisseny, e cavet iniennou stang stag hoaz a galon euz devosion ho reier huel hag ho feunteunioù distro. Hogueu, ar zant en devoue an eur da velet ar falz-credennou-ze o coeza, ha da skinia, hen e-unan, e sperejou an dud-ze hoaz, coulz lavaret, gouez, ar feiz hag ar rilijion a gas d'an Env. Nebeud a nebeud tremp an dud caled-ze euz a guichen ar mor a depaz da souplât, hag e ber amzer e voue gouelet sevel ilizou, couenchou ha chapellou. Evit S. Paul, o velet an eost mad a roe ar greun a c'houneze en eneo an dud keiz-ze, ne roe an disterra hean de gorf. Evel-se he nerz a deuz da simplât a nebeudou, hag e voue red mad d'ez-han rei ar gark euz he escopti, da unan euz ar veleien santel a ioa deut gant-han euz a Vro-Zaoz. Evid hen, a-z-eaz neuze en eul leac'h a gos- tez, hag e tremene he holl amzer er beden.

Ar beleg a lekeaz S. Paul da deleur evez euz he Escopti, eo Joevin, da lavaret eo an hini a falvezaz garth-han tronk ermitach gand ar zant, abalamour d'an eren- gouez a ioa eno. Joevin a dremen euz eun den santel braz: an holl hen galve skuer ha meleziour an ermit- ted. BODEUR.

LIZIRI DA DUD DIVAR AR MEAZ.

Kenta Lizer.

DA VA MIGNOUN PERIG AN DIOT.

Va Mignoun,

Enn despet d'am oll bolontez, n'hem beuz ket ghallet kaoud evit da vab Jakezig an disterra plas digor var an hent-houarn; ma zeus kals kaouar da rei var an henchou-houarn e zedz ive eun nebeud mad a dud oc'h o goulenn. A veac'h eur plassik zo goullou, ma veler al liziri a c'houlenn o koueza e ty ar vistri vraz eghiz eur barrad glao puill; ouспен, ne ked hebken ar banezeien evel d'homp-ni eo a c'houlenn ar plassik-ze, mes e hoas bugale a lignez huel, flour ho drem, skeduz ho dilad ha great gant-o ho oll stadi, ha pere enn despet da ghemment-se a renk peulia meur a vloa abars ma vint kasset da vevel bihan enn eur c'lios gar bennak var ar meas.

Rak-se ta, da vab ne hell mui kounta var an henchou-houarn ha pa droi enn he benn e hell klask fortun enn eur c'hostez all bennak. Mæs penauz ec'h en em ghemero? N'ouzoun ket: Bete vrema en deus tanveat dija meur a zoubenn ha meur a vicher hag he ialc'h ne deo tam pounnereat e ty ar vare hadourien guin, mezer ha madigou: Bete vrema, Jakezig zo het guel o sec ha gouer enn hostalriou vras, o stabeza paper e ty an noterien hag

O klask deski da bep-unan
Ar pez ne c'hoar ked e-unan.
Hag hirio ar paour-kazik n'en deuz evit beva na liard

na guennek, na da grignat nemet ler kaled he voutou ; ha gouskoude, tra estonn! eo gnelloc'h c'hoas gant-hân, uza he voutou oc'h ober netra, ha glâouri gand an naoun eghet distrei d'ar ghear da c'hounid he vara eghiz an dud honest. — Mæs piou 'ta zo bed ar penn-kauz euz he valeur! Ah! te, tad didalvez. O kridi en doa Jakezik muioc'h a spered eghed he vreudeur, e peus great d'heân ober eur slabes studi-ha da vab goude he *gatriem*, o isonjal n'oa den habiloc'h eghet-hân, a zo en em roet da aoutrou. Rak-se, brema e tale'h mad d'he damik, *frak* hag evit-hi da goueza a damou n'e drokfe ked ous chiletan verr he gamaladet-bugaleach. Var he veno, kass ar c'hezeg a ve brema evit-hân eun dizenor, kreghi enn alar a roffe d'heân e houzighennou hag ma ne hell ket mont var an hent-houarn, en deus da viana esper da gaout plas e ty ar ministr, kement-se a helpe bea guir, mes a dra-zur, ne vo ghalled en em zervichoud an-heân e ty ar ministr nemed er marchossi pe er gheghin, rag he damik latin en deus great d'an Aoutrou Jakezik ankounac'haad an nebeudik galleg a zeskas guechall antronos, ma oue lakeat bragour d'heân, ha me zo sur ne hell mui skriva daou c'her galleg heb fazia e pevar leac'h. — Ar pez a estoun ac'hanoun eo n'en divije ket c'hoas da vab sonjet dimizi eghis ma reas brema zo daou vloa he gamalad Laouig. Hema ne ouie petra da ober pa zigouezas gant-hân eun introun Russ. Bet guechall pinvidik mor enn he bro, mæs brema har-lued ha rivined, an introun-ma a zalc'he ar c'haierou enn eur vagajen vin evit ghaloud beva; mæs eur brinsez oa: he mæd a ioa huël, he bleo hir ha du a goueze a istribill var he diou skoas, he ghinou a ioa ledan, he daoulagad lem eghis re eur c'hass; enn eur gher hounnez a ioa eur plac'h dibikouz ha setu ispisial perag e plije da Laouik. Hanta, Perik, ha ma vellez ive eur mintives da vab o treischa enn da dy eun hevelep merc'h-kaer? Gouskoude ne ket tra impossubl: rag eun den yaouank heb ty, heb guele hag anter visked a hell bea touellet gand ar ghenta digouezet enn esperans kaout toën da zisc'havi-ha kik rost da lakaad dindan he zent.

Mæs ne c'hoarzomp ket re. Ha ne deo ket Perig, eun truez klevet da botr, *blân-bek ha koll-bara*, o tisprijout micher he dad, ar c'henta, an honesta hag ar profitapla etouez an oll micherou, rak sur, aoutrounez kear a jomfe digor ho ghinou ha divoëd ho bouzellou ma ne ve den da ada, da easti; ma ne ve den da zavel ha da larda loëned? Ha ne deo ked eur vez-gueled epad an deis da aoutrou *kouezed euz a lost an c'har* o pourmen he *galite* hag he feneantis dre riuou Paris? Ha ne peus te ked aoun da velet da Jakezig o tizenonj da lignez ha da hanô dre eun taol fall bennak pe o vont da vervel d'ar galleou?

Me c'hoar, da vab ne ra nemed en em glem euz he nebeud a iec'hed hag a ners, mæs piou zo kauz euz he zempladurez? Penaus bea krên hag iac'h gand ar vues dizordren a zalc'h abaoue daou vloa? Hirio o tibri friko betek toull he c'houzouk, hag oc'h eva sampagn a

c'huec'h real beteg he zaoulagad ha varc'hoas o c'ha-ouri gand an naoun hag ar zec'het, pa ne vo mui guennek, pa ne vo mui da eva nemet dour anter wein ha da zibri nemet kreunn louëd ha dizec'het, ha c'hoas ne lavaran netra divar benn he droiou kam all pere ne roont nemeur a ners da eun den yaouank. — D'he bemzek vloa, Jakezik a ioa krên ha ru he benn eghiz eur plac'h yaouang ha brema memes c'hoas, en despet d'an ners hên deus kolled o reded euz an eil ty d'he ghile (ha piou a c'hoar pe seurt tyez), brema c'hoas, a lavaran, ec'h hell enn drô tapa he iec'het kolled ha divilina he gar dre eun tamig ear vad, eun nebeudik labour hag eur vrüzunennik bara mad.

Hoghen, Perig, pa ze guir e c'houlennes digan-hên ar pez a dleez da ober euz da vab, me ia da rei d'id eun ali euz ar guella.

Enn despet d'an oll draou kaër a skrivo d'id da vab, enn despet d'ar pedennou tener a rai d'he vam, ne gass mui d'heân na guennek na liard. Guidre a zavo enn-hân, mouzad a rei, gand he zipid hag he humour fall e lavaro d'id martreze e ia d'en em veuzi pe d'en em engaji. Bah! ne res van ebet; kared a ra re mab he vam evit mond d'en em zistruji ha ma kemer plas enn troumplou, guell-a-ze. P'en deo tanveet soubenn ar zoudardet, pa renko palouërad he habit ha spura he voutounennou ha pa glevo c'huez ar boulij o sotal abiou d'he skonarn, neuze al labous treud a zistroi d'he neich, hên deo keun hag a ziredo d'ar ghear da glask he dad hag he vam.

Pebes sotis ec'h eus great pa peus ramplased ar c'hamalad-se! Ma piye e losket da vont d'he regimant, an oll a ve bed æssoc'h; mes nann: hên oa doussig ha kalounig he vam; hên eo a vije gueled ato krog enn he losten, hên eo a vije ato guelet guelloc'h bevët kaeroc'h guisket, mæs ive hên oa ar feneanta pa vije kistion da c'hounid ar zoubenn. — Da vugale all potred ha merc'hed, a zikour ac'hanoud, a labour a ro skouer vad, n'eus nemed ar potr-ze o suna da iac'h hag oc'h ober da boan; kass d'heân kement guenneg e peuz-hag araok bloa da oll vadou hag oll danves da vugale all a vadrebed, eved ha louket gand an Aoutrou Jakezik.

Red eo eta, Perik, distergna ha d'ec'hel stard var ar vestign; pa velo ar potr e ra an hini koz ar skouarn vouzar ka ne zigass mui liard, ar *mab prodig*, skuiz o tioual moc'h aoutrounes Paris, a zistroi d'he neich, ma treze heb boutou na rochet; mæs da viana losteg eghis eul louarn tapet gand eur iar.

Me gred e vo distro da benn an nevez-amzer hag e reoc'h ar foënn hag an east assemblez, ha p'hên deo da botr labourad ha poanied, e veli adarre he benn o tondru hag he oll vemprou teo ha dispar. Neuze mar da mad an traou ec'h helli lac'ha al leue lard evid ober gant da vab eun tamik fest d'a behini ne vankin ket sur.

Reflexionou var al lizer-ma.

Tadou ha mammou, n'o pe ked enn ho kaloun muioc'h a garante pe a breferans evid unan bennag euz ho pugale, da viana kuzit mad ouz an oll ar breferans tije evid unan an-heo. Ar breferans-ze a lakfe trouz ha

jalozieze, n'o potred hag ho merc'hed, hag a lakfe mæd ar heo da gabli-kaz ouz oc'h ha d'o tisprijout. En eil ty ho pugale hag o c'haer a dleid oll; ma virid eun bennag a d'heo muioc'h a garante, eo an hini a labouret muioc'h a zent ar guella, hag a gar Doue an eil ty. — An hini n'o potred hag ho merc'hed, hag a lakfe mæd ar heo da gabli-kaz ouz oc'h ha d'o tisprijout. En eil ty ho pugale hag o c'haer a dleid oll; ma virid eun bennag a d'heo muioc'h a garante, eo an hini a labouret muioc'h a zent ar guella, hag a gar Doue an eil ty. — An hini n'o potred hag ho merc'hed, hag a lakfe mæd ar heo da gabli-kaz ouz oc'h ha d'o tisprijout. En eil ty ho pugale hag o c'haer a dleid oll; ma virid eun bennag a d'heo muioc'h a garante, eo an hini a labouret muioc'h a zent ar guella, hag a gar Doue an eil ty.

MIS MARI.

Leun a vuez hag a frouezen,
Hag e frouezen delicius
Eo hor Salver carantezus.
Mari en e a zo savet
Dreist an oll sent hag an alet.
En t'ud an Tad celestiel,
D'he Mab ha d'ar Speret Santel.
Vel Joseph, o ty Pharaon
Mari azezet var eun tron,
A ren assemblez gant Doue
Var an douar evel en e.
Ja, Mari a ren bepret,
En despet d'an heretiket,
Hag en e ha var an douar
Gant eur galloud meurbed dispar.
Piou a gavo morse comsou
Vit discleria he vertuziou,
E c'haerentez hag ar guenet
En deus Doue varni skignet?
An Drinded santel var he fen
En deus laket eur gurunen
Hag a lugnarn caeroc'h meurbed
Eguet an heol hag ar stered.
Hi zo ar c'han mysterius
Dre hini ar goad precius,
Scuillet var lein menez Calvar
A voalc'h pe c'hejou an douar.
Divar e groas, prest da vervel,
Jesus varni reas eur sel,
Ha deomp oll bugale Adam
E roas e vam evit mam.
Neuze Mari a goncevas
Evidomp eur garantez vras,
Abaoue eo leun e c'halon
Evidomp a compassion.
E daouarn zo leun a c'hraçou
Evit scuill en hon eneou;
Goulenomp eta caloune
Graçou nerzus ha galloudeg.
O c'hui oll pe ze poanniet,
Chagrinet ha melconiet;
Goulenit a greis ho calon
Diganti consolation.
Intanvez paour ha dilezet
It da gaout ar vam benniguet,
Hag hi a zec'ho ho taëlou
O tiseuez deoc'h gloar an envou.
Dirazi a goll ho sclerdet.
C'hui minoret hep mam na tad
It ivez da gaout ar vam vad,

Leun a vuez hag a frouezen,
Hag e frouezen delicius
Eo hor Salver carantezus.
Mari en e a zo savet
Dreist an oll sent hag an alet.
En t'ud an Tad celestiel,
D'he Mab ha d'ar Speret Santel.
Vel Joseph, o ty Pharaon
Mari azezet var eun tron,
A ren assemblez gant Doue
Var an douar evel en e.
Ja, Mari a ren bepret,
En despet d'an heretiket,
Hag en e ha var an douar
Gant eur galloud meurbed dispar.
Piou a gavo morse comsou
Vit discleria he vertuziou,
E c'haerentez hag ar guenet
En deus Doue varni skignet?
An Drinded santel var he fen
En deus laket eur gurunen
Hag a lugnarn caeroc'h meurbed
Eguet an heol hag ar stered.
Hi zo ar c'han mysterius
Dre hini ar goad precius,
Scuillet var lein menez Calvar
A voalc'h pe c'hejou an douar.
Divar e groas, prest da vervel,
Jesus varni reas eur sel,
Ha deomp oll bugale Adam
E roas e vam evit mam.
Neuze Mari a goncevas
Evidomp eur garantez vras,
Abaoue eo leun e c'halon
Evidomp a compassion.
E daouarn zo leun a c'hraçou
Evit scuill en hon eneou;
Goulenomp eta caloune
Graçou nerzus ha galloudeg.
O c'hui oll pe ze poanniet,
Chagrinet ha melconiet;
Goulenit a greis ho calon
Diganti consolation.
Intanvez paour ha dilezet
It da gaout ar vam benniguet,
Hag hi a zec'ho ho taëlou
O tiseuez deoc'h gloar an envou.
Dirazi a goll ho sclerdet.
C'hui minoret hep mam na tad
It ivez da gaout ar vam vad,

er skoliou var ar meas. Ar pez a ra maleubar bed mad eo an dud anter zesket, kridi a reont euzont pep tra e zint ken habil hag an Aoutrou Persoun; ha gouskoude ne ouzont nemed anter leun, adter skriva ha tamc kateghis. — O savet-hi ha d'ha l'ouevy of suo Ispisial, tadou ha mammou, n'e gassit muioc'h a vugale-ze anter skoliety, da dy eun noter dependady eur marc'hadour bennak, rak razi sur int da goll ho vellez hag ho ene hag e pe da renta da Zoue eun gontig vigoum euz eneon ar pugale-ze.

Leun a vuez hag a frouezen,
Hag e frouezen delicius
Eo hor Salver carantezus.
Mari en e a zo savet
Dreist an oll sent hag an alet.
En t'ud an Tad celestiel,
D'he Mab ha d'ar Speret Santel.
Vel Joseph, o ty Pharaon
Mari azezet var eun tron,
A ren assemblez gant Doue
Var an douar evel en e.
Ja, Mari a ren bepret,
En despet d'an heretiket,
Hag en e ha var an douar
Gant eur galloud meurbed dispar.
Piou a gavo morse comsou
Vit discleria he vertuziou,
E c'haerentez hag ar guenet
En deus Doue varni skignet?
An Drinded santel var he fen
En deus laket eur gurunen
Hag a lugnarn caeroc'h meurbed
Eguet an heol hag ar stered.
Hi zo ar c'han mysterius
Dre hini ar goad precius,
Scuillet var lein menez Calvar
A voalc'h pe c'hejou an douar.
Divar e groas, prest da vervel,
Jesus varni reas eur sel,
Ha deomp oll bugale Adam
E roas e vam evit mam.
Neuze Mari a goncevas
Evidomp eur garantez vras,
Abaoue eo leun e c'halon
Evidomp a compassion.
E daouarn zo leun a c'hraçou
Evit scuill en hon eneou;
Goulenomp eta caloune
Graçou nerzus ha galloudeg.
O c'hui oll pe ze poanniet,
Chagrinet ha melconiet;
Goulenit a greis ho calon
Diganti consolation.
Intanvez paour ha dilezet
It da gaout ar vam benniguet,
Hag hi a zec'ho ho taëlou
O tiseuez deoc'h gloar an envou.
Dirazi a goll ho sclerdet.
C'hui minoret hep mam na tad
It ivez da gaout ar vam vad,

T O N I C .

(Trede pennad).

Setu eta Tonig en hent. Er penn kenta edo en he vouet. Ar marc'hadour a ioa eur potr gae ha laouen, eur marvailler, hag ar messaer bihan a ioa eun dudi evithan kement a vele. Alies gouscoude e cave hir an hent. Ar skuider a deue, he ziveskerigou a iea lor, hag he gamejou a verrea, he dreid a veze kignet, ha poan vraz en devoa enho; hoguen mez e vije bet gantha en em glem. Kel laouen hag an heol e veze o tigouezout er c'heriadennou, hag eno e c'avent ato eun tamig lojeis bennag. Ar potr a voa bet boas dioc'h eur vuez calet, ha n'oa ket figuz. Eun tam bara du, eur banne leaz, setu eur pred c'hoec evithan; eun horden foen pe eun horden golo a voa evithan eur guele euz ar soupla.

Ar marc'hadour en doa carguet Tonic da verza le-vriou bihan ha guerziou pe kanaouennou. E kement guilajen a dremenent e verze unan bennag. Ne vouie ket petra a verze, rag ne vouie ket lenn. Ato gouscoude e veze souezet, pa en em lakea ar botred iaouanc d'ho c'hana, oc'h ho guele o tirol da c'hoarzin, hag ar merc'hed iaouanc o ruzia hag o tec'het kuit.

An daou veacher ne joment morse pell e nep leac'h. Ep dale o devoa treuzet oll stankennou ar Garon-huel, ha calon Tonic a voue eun tamig mantret eur mintinvez dre ne vele mui kein menezioù Pyrenee. Caout a rea dezan oa eun disparti all a rea adarre dioc'h he vro. Gouscoude n'edo ket fall ar bed gantha. He vestr a ioa mad avoalc'h outhan. N'en doa he c'hourdrouzet, n'en doa comzet dic'heg outhan nemet eur vech, eur sulvez. Ar potr a glevas cloc'h an oferen o son, hag a zonjas mont d'an iliz evel eur guir gristen.

« Cleo, potr, eme ar marc'hadour, me ne blij ket din orbidou beleien. Ne fell ket din ez afes da zilaou randonerez gantho. Hag evelse les an diotachou-ze a gostez dioc'htu. Lavar kenavo dezho, mar ec'h eus c'hoant e chomfemp mignonet. Clevet a rez, potr, ne ket me eo ar mestr? »

Sebezet oll e chomias Tonig; ne gredas lavaret guer. Morse ac'houdevez ne ziskuezas c'hoant da vont en eun iliz, ha buan da ancounac'hat evel ma zeo an oll vugale, ne voue ket pell ne zante mui an diouer euz an oferen. Kenderc'hel a rea gouscoude da lavaret he bedennou e euz; dievessoc'h dievessa avad ez ea oc'h ho lavaret.

Ar marc'hadour, hanvet Ian-Per, a voa bet digouezet gantha ive evel gant Tonic; n'oa ive nemet eur buguel pa voe roet gant he guerent da eur marc'hadour reder bro. Re iaouanc evit anaout ar mad dioc'h an droug, e voue collet buan dre ar goal skuer. Evel n'en doa na descadurez, na creden, ec'h heuille ep morc'hed he oll ioulou fall. N'en doa bet nemet poan epad he vugaleach, hag he galon a voa deut d'en em galedi. Kerkent ha ma voa deut da veza mestr dre ar maro euz he dirant, e fallas dezhan caout eur sclavour da vour-

revi evel ma ma voa bet bourrevet he unan. Gouzout a rea ez oa tadou mall gantho en em zizober euz ho bugale evit eun nebeudig arc'hant. Destumet en doa eun nebeut mad a arc'hant divar goust he vestr, o terc'hel gantha ar pez a elle da zacha, ha setu penauz en em gave dioc'htu e stad da zével stal he unan, ha da brena c'hoaz eur potr evit mevel. Ar c'heas Tonig e voue ar buguel reuzeudig a goezaz etre he zaouarn. Ar potr en doa great vad dezhan, hag e tie beza diskuezet he anaoudeguez vad. Hoguen tud evelse ne ouzont ket beza anaoudec.

Tonig a ioa aounig ha lent. Senti a rea evel eur c'hi oc'h eur zell epken a zaoulagad he vestr, ha Ian-Per a ioa fougue enhan da veza cavet eur buguel kement dioc'h he zoare. En em glevet avoalc'h a reant eta. Hoguen ar marc'hadour e c'hourc'hemennaz eun dervez d'ar potr lacat e daouarn eur vaouez coz anter zall eun tam marc'hadourez intret eleac'h eun tam marc'hadourez vad e devoa choazet. Tonig ne fellas ket dezhan senti. Kerkent e voue laket ar vaz ha moull ar vaneg da c'hoari; hag ar potrig kez a velas neuze e pe seurt den o doa he dud he fiziet.

Neuze e teuz en he speret ar zouch da guemeret an teac'h. Hoguen Ian-Per a velaz ervad kementse hag a lavaraz dezhan en eur vous-c'hoarzin: Claoustre emaoût o sonjal tec'het. Gra, da velet; mes da ler a gousto dezhan. Va divesker-me so hir ha n'int ket scornet. Me ne vezin ket pell evit lacat adarre va c'hrabanou varnout, ha neuze e veli penauz e vezi lardet. Er gear ken nebeut ne vezi ket diguemeret. Din-me out evit deg vloas. Me'm eus da baet, ha ma talc'hfe da dud ac'hanout, me lacai ober dezho evel d'al laeron. Ia da, eur pez caer am eus great sur oc'h da guemeret, eur mec'hieg evelout! N'eus fors, guele e vezo; sao da bacat, ha bale!

Ar c'homzou-ze, lavaret dre gounnar gant eun den dibenn, a strafuillaz oll ar buguel. Sonch a deuas dezhan euz ar gaoz en doa clevet etre he dad hag ar marc'hadour an nosvez ma voa digouezet en he di. Sonch a deuas dezhan euz an arc'hant en doa clevet o stirlincat, hag ec'h anavezaz ervad oa bet guerzet d'ar marc'hadour. A neuze he zrem a deuas da steni gant an nec'hamant; an anken a c'hriennaz en he galon.

Souden ar buguel reuzeudic ne voue ket diæs dezhan conta pet dervez a dremene ep beza bazatet. An distera digarez a rea he zamma a daoliou. Gouscoude pe guer braz aoun bennag en doa rag he vestr, hema ne ellas morse he lacat da ober netra a enep he goustians. Evelse ne ellas mui he lacat da verza soniou fall. Ar potric mad en doa clevet gant Ian-Per he unan petra ioa var ar c'hanaouennou-ze, ha ne fellas mui dezhan ho guerra. Chom a rea en eur c'horn bennag, e kichen ar c'heriadennou, azezet e costez an hent, hag eleac'h diskuez ha kinnig he ganaouennou, ho c'huze. Pa zigoueze ar marc'hadour euz he droiou, pa her guele chomet evelse da sora, her bazate, e loske mil bec'het varnezhan. Hoguen ar buguel a zalc'he mad ato.

(Eur pennad all eur vech all). G. M.

Hono ar Zent evit ar Sizun-ma.

- 1. — Sant Per, merzer.
- 2. — Santez Catell a Sienn.
- 3. — S. Philip ha S. Jacob, ebistel.
- 4. — S. Athanaz, escop, ha doctor euz an Ilis.
- 5. — An deis ma voue cavet ar groas santel.
- 6. — Santez Monica, intanvez.
- 7. — Eil sul goude Paso: Deis ma voue douguet redegou S. Corintin ha S. Paul da Guemper ha da Gastel.

An Abostol hirio :

Val breudeur, ho pezet sonch euz ar re so bet carguet ac'hanoc'h, euz ar re o deus prezeguet deoc'h comzou Done. Sonjit penauz o deus echuet ho buez hag o pezet seiz evel dho.

Jesus-Christ a ioa deac'h, bez'ema hirio, bez'e vezo da viken. Na roit ket a scouarn da guenteliou dishenvel dioc'h he re. Mad e ve deoc'h startat ho calon dre ar c'hras, ha ne ket dre lezennou divarbenn ar bouet ha ne deus ket great a vad, d'ar re o deuz ho miret.

N'en euz eur victim, hag ar re a heuil al lezen goz ne allont ket he dibri. Rag corfou al loenet a veze casset ho goad, el leac'h santel, gant ar beleg braz, a veze devet er meaz euz ar c'hamp. Ha setu perag Jesus, evit sanctifia he hopl dre he c'hoad, en deus gouzanvet er meaz a zour kear. Deomp eta er meaz euz ar c'hamp; deomp ditout Jesus-Christ en eur zougouen ar beac'h mezuz euz ar groas. Rag ne maomp ket ama en eur gear eleac'h ma tleomp chom ato; clasc a reomp eun all da vont da gom enli eun deiz. Kinnigomp eta dreizhan ep ean da Zoue eun hosti a vepleudi; da lavaret eo lakeomp hor muzellou da renta gloar d'he hano. Ho pezet sonch da veza mad da rei ha da ranna ho tanvez gant ar re all, rag dre an hevelep hostion eo e plijer da Zoue. Sentit oc'han re so carguet ac'hanoc'h; pleguit d'ho gourc'hemennou; rag beilla a reont varnoc'h o veza ma tleont renta cont da Zoue euz hoc'h eneou.

us in Lizer, Sant Paul d'an Hebreanet. xiii. 7. G. M.

KELEIER.

An Adrou Vesins, escop Ajen, so maro en der-veziou tremenet.

Diou barrez euz a Escopti Kemper o deus savet pep a bemp cant lur evit delc'her daou zouav e servich ar Pap.

Eoar anter ebrul e Kemper e deus bet eun dervez bras, petra bennag ma voa aoun rag an amzer dioc'h ar mintin. Ar c'hezeg a iea mad; al loenet corn a ioa discar varnezho.

Er sizun-ma e velomp adarre merket var ar c'haze-

tennou, e calz a escoptiou a Frans, pemp cant lur ama, pemp cant lur ahont, evit delc'her zouavet en arme hon Tad Santel ar Pap. Bez ez euz escoption (evit skuer escopti Arras), hag a zalc'h a vrema eur zouav ha tregont e Rom.

Ma c'houfet petra eo eun oferen? Eur gazetenn euz eur Berry a gomze en dez all euz eur missioner a voa coezet clan. Ar re a voa var he dro, o velet pe guen dinens oa eat, a lavaraz dezhan: ma c'houfet ar medecin pe stad emaoch, e tifente oizoc'h lavaret an ofereo. Ar missioner a respontas: ma c'houfet ar medecin petra eo eun oferen, eleac'h difen ouzin, e c'hourc'hemente din he lavaret!

Er sizun-ma ar memes gazetenn a gomz adarre divar benn an oferen.

Brema ez euz eun nebeut bloaveziou, emezhi, person eur barrez a escopti Bourj, collet he ners gantha dre he labour hag he skuider, a fellas dezhan mont da Paris, d'en em lacat etre daouarn eur medecin gouezec ha brudet braz, hag ar pez zo guelloc'h c'hoas, christen mad.

Ar medecin, goude beza guele he glanvour hag evesseat mad outhan, a lavaraz dezhan en doa eur goal glenvet. « Red e vezo deoc'h, emezhan, lacat ar brassa evez, ha chom crenn da cana. Difen a lan ouzoc'h eta labourat, ober an distera tra euz ho carg, epad marvion oc'h heilla ar reiz buez a roan deoc'h. »

— Ha difen a rit ouzin lavaret an oferen, eme ar beleg?

— An oferen? eme ar medecin, oh nan; ar Frans e deus re a izom oferennou!

Cazeten ar Meziou a bed an oll vistri seol hag an oll dieien, brema p'ema an nevez amzer o kont, da ziden oc'h ar vugale dineicha al labouset bihan. Al labouset bihan a zistruch bep bloaz, a vilferou, ar c'huilet tann, ar prenvet guenn, ar prenvet glaz, hag ar re-ma, ma n'avent ket distrujet a lone ar bleun, ar frouez, an ed hag oll vadou an douar. Er c'harter ne ve ket a labousetigoù enha, an oll gounideguezioù a ve distrujet gant ar bern loenedigou a veri var an douar. Var guementse e cont an histor-ma:

Frederic eil, roue Prus, a garie calz ar c'herez. Ar roue-ze a voa eur potr seac'h, ha pa lavaraz euz dra, n'oa ket da lavaret nan dezhan. Eur bloavez ar filipet, dre ma o doa naoun pe dre ma c'avent mad ive ar frouezen-ze, na loncaz ar c'herez e liorz ar Roue. Staga a rejont dezho evel pa vijent bet tra eur paour kez. Frederic, ec'h ellit cridi, a voue tenval he benn pa velas kementse. Kerkent e voue roet urs da laza oll kement filip a voa a dost da balez ar Roue. Buan e voue sentet oc'h an urs-ze. An oll en em lekeas da zistruja filipet, hag a benn penn ar bloas ne velet ket eur filip o c'hournijal dre eno.

Frederic a grede beza sur e chomje gantha iviziken he guerez mad hag e c'helje lipat he vourrou. Siouas, ar bloas varlerc'h ar guez a ioa evel pa vijent clan. Ar pren-

vet glaz a zebras ar bleun cazi oll ; ne voue nemet eur guerezennig bennag ha c'hoas treud treud ; an eil bloavez ne jomas ket eur vleuen nag eun delien. Oll e voant crignet. Abenn an trede bloavez ar guez a voa maro ; ar prenvat glaz a ioa deut abenn d'ho laza. Red mad e voue clasc filipet da zigas adarre er vro, ha pa vije red lezel gantho ho lod euz ar c'herez.

Ar pez a lavarer ama divar benn ar c'herez, a eller da lavaret ive divar benn ar frouez all, ha divar benn an ed, ha ne deo ket ar filipet epken, mes ive al labousedigou all a zistruch bemdez eun niver braz euz ar prenvat pere a grign oll froueziou an douar pa na vez netra oc'h ober ar brezel dezho.

Maro eun Impalaerez euz an Turki. — Eun nosvez, e creiz ar goan, an tad Chrizostom, superiol couent Sant Anton, e Constantinopl, a voa en he doullic cambr, var he zaoulin e treid he Crucifl. An ti a stracle gant an avel. E creiz an trouz a rea an avel o sourral hag o iudal, an tad Chrizostom a glev skei var dor ar gouent. Kerkent ec'h erru ar breur porcher dronglivet, en eur grenna, ha var he lerc'h daou zoudart. Unan anezho a roas d'an tad Superiol eun tam paper aberz ar Sultan (Impalaer). Dioc'htu an tad Chrizostom a ia d'ar chapel da stouet dirag ar Sacramant, ha neuze ez a gant an daou zoudart d'ar pors mor. Eur vag a ioa oc'h ho guedal, ha pevar martolod varnuguent gant pep a rouenv. En eun taol ar vag ho c'hassas da gaout eur Palez.

En eur gambr acoutret caer ez oa astennet var he guele eur vaouez clan, toc'hor ha poaniet braz. Ar gambr a voa aleiz a c'houlou enhi, mes didrouz oa. Eur medecin a voa e tal ar guele hag a zalc'he crog e breac'h an hini glan evit guelet penauz e laboreu he goaziet. Diou sclayourez morian a voa adren an or, prest da ober ar pez a vije gourc'hemennet dezho. Eun nebeut larcoc'h e voa eun den hag a ziskueze beza glac'haret bras.

An den-ze a elle caout var dro tregont vloas. Huel oa a vent. An eaz anezhan, coulz hag he viscamant a ziskueze oa a reng huel. He huanadou a ziskueze ar glac'h ar a ioa en he galon. Tremen anternoz oa pa zigouezaz an tad. Eur morian a deuas da gaout an den glac'haret-ze, a stouas bete'n douar, hag a lavaras dezhan : « Ema aze ; lavaret e vezo dezhan dont ? » An Turc bras, (rag an Turc braz oa) a respontaz he zigas dioc'htu er gambr. Neuze e reas sin d'an oll da vont kuit, hag o tostat oc'h ar glanvourez e lavaras dezhi : « Va mam, falvezet eo deoc'h mervel e relijion ho tadou. Ho polantez bezet great. Setu ama eur belec. »

An tad Chrizostom a ieas neuze beteg an hini glan, hag epad eun heur e silaouaz he c'homzou leun a guez hag a c'hlac'har. Aliez an daclou a deue da reddeg euz he daoulagad epad ma comze. Goudeze pa zistroaz an Turk bras da guichen guele he vam, an tad Chrizostom a roaz he sacramanchou dezhi dirazhan. N'oa nemet ar

Prins var al leac'h, hag epad ar ceremoni-ze e voa en em daolet d'an douar en eur bedi he Zoue.

Ar brud e voa bet soudardet o kerc'hat an tad Chrizostom a voa en em skignet buan er c'horn a guar tost d'ar gouent. Mintin mad an oll er goue, ne gomzet nemet a guementse, ha pepini a lavare ar pez a zonje. Lod a grede e voa laket er prizon, lod zoken e voa laket d'ar maro. Evel m'o devoa mall an oll da c'houzout petra ioa tremenet, unanou bennag a ieas beteg ar gouent. Pe guer souezet ne vouent-hi ket o caout an tad er chapel o pidi, stouet dirag an aoter ! An tad Chrizostom a voa eno didrouz, hag a bede caloneg evit ene mam ar Sultan (an Turc bras) maro kerkent ha m'en doa he sacramantet. G. M.

Tennet euz ar gazetenn *Revue de la Presse.*

HENT HOUARN,

euz a Vrest da Roazon, hag euz a Roazon da Vrest.

Euz a Vrest da Roazon.

	KENTA TREIN.	EIL TREIN.	TREDE TREIN.
Brest	7 h. » m.	creisdeiz.	4 h. 05 noz.
Montroulez...	8 50	1 h. 58 m.	7 »
St-Briec.....	11 40	4 50	» »
Roazon.....	2 55 noz.	8 »	» »

Euz a Roazon da Vrest.

	KENTA TREIN.	EIL TREIN.	TREDE TREIN.
Roazon.....	3 h. 55 m.	5 h. » m.	10 h. 50 m.
St.-Briec.....	7 07	8 05	1 44
Montroulez...	9 54	10 h. 50	5 27
Brest.....	11 40	12 45	7 20

PRIZ AN ED.

KEMPER. — 15 Ebr.

Priz ar c'hant lur.

Guinis....	15 lur, 32 c.
Segal.....	9 lur, 60 c.
Eiz.....	9 lur, 80 c.
Ed-du....	7 lur, 23 c.
Kerc'h....	8 lur, 54 c.
Avalou-douar	4 lur, « c.

MONTROLEZ. — 15 Ebr.

Priz an hectolitr.

Guinis....	23 lur, 69 c.
Segal.....	« lur, « c.
Eiz.....	42 lur, 67 c.
Ed-du....	43 lur, 30 c.
Kerc'h....	9 lur, 40 c.
Avalou-douar	42 lur, « c.

PONT-NABAT — 18 Ebr.

Priz ar c'hant lur.

Guinis....	15 lur, 73 c.
Segal.....	9 lur, 58 c.
Eiz.....	9 lur, 38 c.
Ed-du....	7 lur, 40 c.
Kerc'h....	9 lur, 25 c.
Avalou-douar	4 lur, « c.

BREST. — 15 Ebr.

Priz an hectolitr.

Guinis....	25 lur, 04 c.
Segal.....	23 lur, 56 c.
Eiz.....	43 lur, 98 c.
Ed-du....	44 lur, 29 c.
Kerc'h....	40 lur, « c.
Avalou-douar	8 lur, 40 c.

Ar Gerant: AR. DE KERANGAL.

Kemper, moulet gaud AR. DE KERANGAL, Moullan an Escopti.

FEIZ HA BREIZ,

KELOU A BEP BRO, HA KENTELIOU VAR BEP TRA,

DIGASSET BEP SUL

Da guement Christen a goms ar brezoune.

Eun Abonnamant d'ar Gazeten a goust :

Evit eur bloas.....	DAOU SCOUET.
Evit c'huic'h miz.....	EUR SCOUET.
Evit tri miz.....	C'HUEC'H REAL.
Eur gazetenn ebken.....	DAOU VENNEC.

Ar baebmant a dle beza great araog caout ar gazetenn.

KEMPER, 4 Mae 1867.

Caout a ren tiadou tud etouez pere e vez nebeut hano a Zoue hag a vijeonezou ar feiz, hag a fell dezho gouscouda beza tud seven ha dereat, tud direbec'h, tud honest ervez ho mano. Ne garfent ket guelet nicun en ho zouez o vaneout d'an honestiz, o coeza en eun dizurs bennag a alse, ober gaou ons brud vad ar famil. Ar vugale a vezo desket da zional oc'h kement a ell beza mezh evitho hag evid ho zud. Savet ha diorroet e vezint gant sench da ober anezho tud honest ervez ar bed, ha kementse dre ar zantimant ato da guenderc'hel didach hengr an ti. Euz a Zoue avad hag euz he zonzans, ne vezo guer ebet. Euz ar relijion ne vezo ket a hano, nemet epken euz eur poent bennag a ve ar c'his da lieulla etouez an tiad tud-ze. Ha mar guelont unan bennag euz ar vugale dize oc'h an hevelep kenteliou, mar guelont unan bennag trec'het pe var nez beza trec'het gant heiz ho ioulou fall, unan bennag ha ne ziskuezont ket beza sourciuz avalc'h euz ar brud mad-ze a fell dezho da guenderc'hel, setu hi nec'het ha souezet. Estlami a reont o velet n'o defe ket ho c'henteliou muoc'h a nerz evit o deus. Ne zonzont ket, an dud keiz, ez eo dister, ez eo diners santimanchou ar bed evit pel-lat an den dioc'h an droug. Ne zonzont ket en deuz izom an den, evit trec'hi he voal ioulou, ne ket epken euz a zonzans ar bed, mes c'hoaz, ha dreist oll a zonzans Doue, en deuz izom da veza sclerijennet dre ar feiz, en deuz izom da zonzal ema Doue ato o sellet outhan hag her c'hastizo mar gra an droug !

Setu petra zonje eun den iaouane, eur micherour, a deue en dez all, da gaout eur beleg evit coms dezhan euz he vreur a so er bloa-ma er c'hatekiz, en oad da ober he basc kenta. An den iaouane-ze so ar c'hossa a bemp minor collet gantho bo zad hag ho mam, hag a zo evelse carguet euz he vreudeur ha c'hoarezet. Dont a rea da gaout ar beleg evit he bidi da deleur evez oc'h he vreur. « Va breur, emezhan, so izom braz da veza var

ALIOU.

Ar serijou a ve c'hoant da lacat er gazetenn a dleer da adressi oll d'an Aotrou MORVAN, Beleg e Kemper.

Ar paebmant a dleer da adressi d'an Aotrou SALAUN, ebken. An abonnamant a guemerer e ti an Aotrou SALAUN, librer, ru Kereon, e Kemper.

evet anezhan. Speret en deus, ha calon vad ive avelou. Hoguen mouzer eo hag aouant. Avelou e laer traouigo, hag em euz aoun na rafe eun dervez bennag mez deomp. Rag evidomp da veza pabur, on eus brud vad, ha morse n'eus bet rebechet netra deomp. Va mam, araog mervel a lavare din : laca evez mad oc'h an naoc'ze ! Great on eus guella ma c'hellemp, va c'hoar ha c'hoar. Gouscouda e velan ervad ne ellomp ket ober couz ar vugale great va mam, ma vije chomet beo. Aoun braz am euz na rafe eun dizhenor bennag deomp. » Ar beleg a velas dioc'h tu e voa eno eun den iaouane, den honest ervez ar bed, mes ep santimant a relijion ebet, hag e lavaras dezhan :

Ober a rin evit ho preur kement a ell eur beleg da ober. Cridi a ran e rai eur pase mad, rag gouzout mad a ra he gatekis. Hoguen ar c'hallout on eus-m var speret ar vugale ne bad ket pell ma na deus ket ho zud da guenderc'hel ar vad on eus comaset, da guenderc'hel ar c'henteliou o deus bet diganeomp. Ha ne viot-hi ket droug contant ma lavaran ama deoc'h didroel ar pez a zonzan ?

- Lavarit ep aoun ebet, eme an den iaouane.
- Aoun oc'h eus na guesse ar potric-ze en eun dizurs bennag a rafe mez deoc'h ?
- Ia, aoun braz am eus.
- Mad, n'oc'h eus nemet rei skuer vad dezhan.
- Skuer vad ? eme an den iaouane, rei a ran a gar din, ne gredan ket em bese roet goal skuer da zenn. C'hui a zonzh deoc'h, me oar vad, abalamour ma zomp micherourien ne deus nemet fallagriez oc'h hon heul ?
- Me vouie ervad, eme ar beleg, ne dlle ket plijout d'eoc'h ar pez am oa da lavaret. Gouscouda p'am eus toulllet caoz, ho pedan da zilaou va zonzh penn da benn.

Rei a rit skuer vad d'ho preur en eur c'hiz, hag en eur c'hiz all ne roit ket. Fallout a ra deoc'h he lacat da gaout aoun na rafe gaou oc'h he vrud mad hag oc'h brud mad tud he di, ha n'euz hano ebet ganeoc'h euz ar gaou a elle da ober outhan he unan, ouz he ene. C'hoant oc'h eus d'he velet o touja an dud, o touja ar bed, ha ne glaskit

ket rei dezhan doujans Doue. Eun den honest e fell deoc'h e ve, direbech dirag an dud, mes ne glaskit ket ober anezhan eur c'hristen mad, direbech dirag Doue. Doujans ar bed a ell miret oc'h hiniennou marteze d'en em rei, d'an droug, evel doc'h-hu a so deat d'ho pemp bloas warnuguent ep coeza en dizurs gant ar zouch-ze epken; hoguen bez'ez eus re all hag a ranker caout d'ho dere'hel liamou creoc'h evit doujans ar bed. Ho preur so scanvoc'h a benn evidoc'h-hu; he voal ioulou so creoc'h, ha cridi a ellan lavaret, ma n'en devez ken aoun nemet rag ar bed, e vezo eur potr dizuch abenn pevar bloaz ama. Va list eta da lavaret deoc'h eun eil guech: Roit skuer vad dezhan; heullit mad ho relijion; bevit e guir gristen. Grit ma vezo gallet lavaret d'ho preur n'en deus nemet ober evel doc'h. Den honest oc'h; n'en em roit da zizurs ebet; n'oc'h euz eta nemet ober ho teveriou a gristen. Pa velo ho preur ac'hanoc'h o caout doujans Doue, en devezo doujans Doue ive, hag an doujans-ze a jomo ganta pa vezo deut re vraz evit douja he vreur.

An den iaouanc a guimiadaz ama dioc'h ar beleg, en eur lavaret e tenje adarre ep dale d'he gaout, evit en em lacat a zevri da ober he zeverion christen.

Nag a bet den a gafet evelse ! nag a bet tiad tud ha n'ema ket o ren en ho zouez doujans Doue, ar speret christen, ar speret a feiz ! ha dre-ze ne dlefet ket beza souezet ha pa goessent nebeut ha nebeut en dizurz hag en dismegans. G. M.

Prezeguen hon Tad Santel ar Pap, en ilis Sant-Per, d'ar Laou Gambit. — « En amzer ma en em gavomp enha, ha ma oc'h alian oll da zonzal a zevri e passion hor Zalver Jesus-Christ, e velan en dro din eur vanden, eun niver braz a gristenien vad o c'houlen beza benniguet ganhen. Petra bennag, hen anzao a rencan, ma zeo an dra-ze eur skuisder evit eun den eoz (rag va guelver a ner an den eoz euz ar Vatican), da lavaret eo, ar Pap ne deo mui eun den iaouanc; nebeut a dra a ell her skuiza; gouscoude ar skuisder-ze am c'harg a laouenidiguez, hag eun dudi eo evidhon ho cuelet renket en dro din. Esper am euz e teuit oll ama evit ar speret ha gant eur speret mad. En hon amzer, nebeut a dud a zouch er speret, en ene, re e sonjer er c'horf. Red eo caout ar speret a feiz, hag esper am euz eo gant ar speret-ze eo e kemerot perz e lidou caer ar Zizun Santel hag e recevot bennoz ar Pap.

« Cals protestantet so, hag, ep caout ar speret a feiz, a fell dezho en em gaout el lidou-ze (ceremoniou). Bez'ez eus euz comzou hag a fell dezho da glevet.... Ato e pedan exitho an Aotrou Doue; evit ma roi dezho ar speret a virionez; rag ne deus nemet eur feiz, nemet eur vadiziant, nemet eun Doue, hoguen esper am euz e teui eun amzer ma o devezo an oll ar memes feiz, ar memes badiziant, ar memes Doue. Ho pet sonch ne dleer ket beva epken evit ober traou ijinuz, evit prena ha guerza, evit an danvez.

« Ar bed en deus ancounac'het braz ar speret; en em vaestlet eo d'ar c'horf. Ar bed ma comzan anezhan

ne ket me eo; me n'oun ket euz ar bed; ne ket c'hui eo; c'hui so eur vanden gristenien; mes ar bed a vraz en deus ancounac'het tre ar speret evit soursial epken euz ar c'horf. Ne ket gouscoude difennet ober he afe-riou, beza ijinuz, prena ha guerza; eun tad a famill a dle lacat he ijin da zouten he dud; hoguen ne ket en dra-ze epken e tleer sonjal er vuez-ma. Rasse ta, pa zeot euz a Rom, hanvet ar *guezar santel*, me esper e cassot ganeoc'h eun dra vad bennag, a dostai ouz ho calon, a rai vad deoc'h, ha ne ket eun dra da ober vad d'ar c'horf e vezo. Ho pet sonch, me ho ped, ne maomp ama nemet evit mont etrezeg Doue, n'on eus ken afer nemet d'en em renta santeloc'h.

« Evit santelaat ar speret, eo red sonjal e termen hor buez. Red eo sonjal e tleomp en em gaout oll dirag Doue en deis braz euz ar maro evit beza barnet gantha var ar pez on devezo great. *Me ho ped, va bugale guer, ho pet sonch oc'h euz eun ene.* Red eo caout muioc'h a zoursi anezhi eguet euz an danvez, euz ar c'hemverz, euz an hentchou houarn, muioc'h eguet euz an oll draou didalvez-ze. Ne deo ket difennet sonjal enho. Hen ober a eller pa her grer gant eur speret a lealdet hag ep en em staga re outho. Hoguen, hen lavaret a ran c'hoas, ho pet sonch oc'h euz eun ene crouet dioc'h henvediguez Doue, hag a dle mont eun deis dirazhan. Renta a ranco cont euz he oll oberou, euz a eur vuez hag a vezo padet marteze deg vloaz ha pevaruguent, cant vloaz; red e vezo renta cont a *bep tra*. Sonjit eta mad e kementse, va bugale, ha na ancounac'hait ket e tal hirroc'h ar speret evit ar c'horf.

« Kemerit eta ar venediction-ma evit oc'h oll me-noziou. Ho penniguen a ran, va bugale guer, ho penniguen a ran oll en hano an tad en deuz ho crouet; en hano ar map, ho Salver, en deus gouzanvet ha scuillet he c'hoad evit ho prena; en hano ar Speret-Santel a lacat he sclerijen da ziken varnoc'h evit rei deoc'h ar speret-ze a feiz, hag ober deoc'h anaout ar virionez: *Benedictio Dei omnipotentis, Patris, et Filii, et spiritus sancti, descendat super vos et maneat semper!* »

ROM. — An daouzeg a ebrel eo het great e Rom an deiz ha bloaz euz a zistro Pii Nao en he guer-benn, er bloas 1850, hag euz an doare burzudus ma chomaz ep beza gloazet en darvoud c'hoarvezet gantha, er bloaz 1855, e santez Agnes diaveas-kear. Er bloas 1855, evel ma c'hoar an oll, ar Pap o veza en eur gambr e content santez Agnez hag ar gardinalet hag eun niver braz a dud en dro dezhan, ar planch a grevas gant he veac'h din-danho. Coeza a rejont ac'hano d'an traon; meur a hini a voue gloazet, hoguen ar Pap n'en devoue ket a zroug. Tud Rom o deus diskuezet en dervez-ze ho c'harantez evit vikel Jesus-Christ. Kear so het sclereat gant gou-jaou ep niver. Eun daolen gaer ha braz en honor d'ar Pap a ioa laket var unan a dachennou kear evit diskuez d'an oll. An oll a lakea kear da dregarni gant ho c'hri a joa dre ma tremene Pii Nao.

AJEN. — An Aotrou Vesins, escop a Ajen, maro eun nebeut denvezioù so, evel ma on euz he lavaret er sizun dremenet, en doa pevarzeg vloaz ha tringuent. Bet oa sous-prefet er penn kenta euz he amzer, hoguen er bloas 1830 e dleaz ar bed evit mont da velec. Er bloas 1841 e vone great escop euz a Ajen. Gouarnet en deuz an escop-se epad c'huoc'h vloas varnuguent.

Ar bescop a ioa het en he raog en Ajen, en doa gouar-rog an escop epad daou-uguent vloaz, hag a reaz, araog mervel, an dilez euz he gang abalamour d'he oad bras. Istin ar c'hoas keleier all divar benn ar gouel het e Rom an daouzeg a ebrel. Oll zoudarded Rom a ioa var zao hag en ho braoa. Ar Pap en he garroz a dreme-nas ebriou dezho. Antercant mil pe drougent mil den da nebeut a voa en em renket da velet ar Pap o tremen. Hon Tad Santel hag ar re hen heuille ne deant nemet d'ar pap. Adistin tan a voa var ar ster a loske tennou canol. En oll brenestou ez oa renkennadou gouloun. An oll a ijin d'an daolen dre ma tremene ar Pap evit goulen he vennos. Ha gouscoude etouez kement all a dousmae'h hag a levonez n'eus ket digouezet eun darvoud, n'eus ket het eun dizurs.

Toulouz. — Etouez ar zouavet eat da Rom d'en em lacat a servich hon Tad Santel ar Pap, ez eus nevez maro eun euz a escop Toulouz, Ar bescont iaouanc Emil Exea. Maro eo d'ar oad a c'huoc'h vloas varnuguent. Bet oa c'hoas kentoc'h e Rom o servicha, epad daou vloaz, e rang ar zouavet. Brema en doa great an diles a bep tra evit mont adarre, hag ez eo maro merzer euz he calon vad hag euz he garantez evit an ilis santel. An tleer ar d'ar deiz he zamet. Camaradet, mignonet, kousid estren, oll o deuz ar brassa keuz dezhan, hag hon tad a der da veniguen dorn an Aotrou Doue pehini a deo evit recompari ar re her c'har.

LUÇON. — An Aotrou Beaumont, nis-bihan d'an Aotrou Beaumont, arc'hescop brudet euz a Paris, en deus roet peadra da zele hier daou zouav e servich ar Pap, cleac'h he zaou vap, c'hoas re iaouane evit gallout mont m'ho gant da zifen Vikel Jesus-Christ. Ar c'hossa euz an redou vap-ze n'en deus nemet eis vloas. Plijadur a zo goudeca santimanchou christen evelse. G. M.

HISTOR ZANTEL
(UNNEKVED PENNAD).
GOULIOU ANN EJIPT.
EXOD. X.
Exeed Gouli. — Ar C'hilleien-raden, pe ar zaillerezed.
Ann Aotrou Doue a lavaraz da Moizes: It da gavout Pharaon en he balez; rak kaledet am euz he galoun hag hin he zervicherien, evit ma rina ann holl vuzudou am euz da ober var-n-han. Hag ma tanevellot d'ho pu-

gale vihan, eveziek d'ho selaou, pet giteach em bezo skoet var ann Ejiptianed, ha pet burzudus em bezo great eun ho zouez; hag evit ma ouot eo me ann aotrou.

(Doue na ra netra ez vean; ma na broun ket he alle-riou d'ann dud fall, e profitint d'ar re vad. Doue a vije e vije he daolour didalvez evit Pharaon hag ann Ejiptianed; mes talvouduz e vijent d'be Israhelites, ha d'he gristenien dreveatoc'h. Hag e c'houre nemet d'he benn ho c'houlid ar vugale a zeuje var ho tere'h. Mad eo eta lenn historiou ann Testamant koz, ha ne ann Testamant nevez, ha setu perag int tekeat e brezonneg evid hoc'h, va c'henvezid.)

Moizes hag Aaron a reaz eta da gavout Pharaon eun he balez; hag e leveront d'ezhan: Chetu peira a lavar ann Aotrou, Doue ann Hebreed. Bete p'eur e fell d'hoc'h-hu choum hep plega d'ar-me? List va bodi da vont, evit ma rar eur zakrifis d'ar-me. Hoguen, mar enebit ouz-in ma ne fell ket d'hoc'h kel lezel da vont e tigassinn vare hoaz killeren-raden var ho pro-penn da benn. Golei a rint gorre ann douar, ken na vezo guelet tamm anezhan. Hag e tebrint kement mad a zo chon-met a zileric'h ar grizil; rak kignat a raint kement bod-koat a vrons er parketer. Karga a raint ho tuez ha re ho servicherien, ha re ann holl Ejiptianed; ha kement a vezo anezho, n'ho deuz biskoaz ho tadou hag ho tadou koz guelet kement all.

Var ghemet-se, Moizes a droaz he grom, hag en em dennaz er meaz euz a zirag Pharaon. Hoghen servicherien Pharaon a lavaraz d'ezhan: Bete pegheid e c'houzanvimp-hi ann drougou-ma? List an dud-se da vont, evit ma raint ho zakrifis d'ann Aotrou ho Doue. Ha na velit-hu ket eo eav ann Ejipt da goll? hag e c'halvont endro Moizes hag Aaron da gavout Pharaon. Hag he-ma a lavaraz d'ezho: It, list g'ho sakrifis d'ann Aotrou ho Doue. Mes plou eo ar re a dle mont d'he ober?

Moizes a lavaraz d'ann holl vuzudou hag ann holl vihan ha gant hon tud koz, gant hor paotred hag hor mer-c'hed, gant hon derved hag hor chatal braz, rak hid braz an Aotrou Doue eo hen nevez.

Ha Pharaon a respontaz diehek: Ta, ta! va vezo ann Aotrou gan-ehoc'h e c'hiz ma ho lezinn da vont. Kit, c'houi hag ho pugale vihan! plou na vel ket hoc'h euz eur zonz fall bennag eun ho spered? Ann fradur me d'aint ket evelse; mes it hoc'h-unan, c'houi g'hoaz, ha grit ar zakrifis d'ann Aotrou; rak ann dra-ze eo hoc'h euz goulennet er penn kenta.

Ha raktal e oent kasset kuit a zirag Pharaon. Hoghen an Aotrou a lavaraz da Moizes: Astennit ho tourn var zouar ann Ejipt da zigas ar c'hilleien-raden. Ha Moizes a astennaz he voalen var zouar ann Ejipt, hag ann Aotrou a lekeaz eun avel zeac'h ha tanuz da c'houeza epad ann deiz-se hag epad ann noz; ha pa oe deuet ar mintin, ann avel domm-ze a zigasaz ar c'hilleien-raden, hag e pignjont var holl zobar ann Ejipt, niver ebet anezho; biskoaz ne oe guelet kement all araog ann amzer-ze, ha n'e vezo guelet biken. Golei a rejont gorre

ann douar enn-holl-d'ann holl, o c'hoasta pe o kas da goll pep tra: Holl c'heod ar vro a oe lounket gant-ho, hag ar pez a frouez a oa chomet er guez varlerc'h ar grizil; ha n'e choumaz netra c'blaz dioc'h-tu nag er c'hoat nag er gheod dre ann holl Ejipt.

Var ghemment-se Pharaon en em bastaz da c'hervel Moizes hag Aaron, hag a lavaraz d'ezho: Pec'het am euz enep'ann Aotrou hag enn hoc'h enep-hu. Mes pardounit d'in va fec'hed ar veach-ma c'hoaz, ha pedit ann Aotrou ho Toue, evit ma lamo' divar-n-oun ar voalen-ma ker goaz-hag ar maro. (Rak' elciz a dud a varve pa groghe ar c'hilleien-raden enn-ho. Furnez xvi. 9).

Moizes o veza eat kuit a zirag Pharaon, a bedaz ann Aotrou; pehini a lekeaz enn avel gre' mœurbed da c'houeza euz a du ar c'huz-heol, hag a skubaz gant-han ar c'hilleien-raden, hag ho zaolaz ebarz er Mor-ruz. Ne choumaz ket unan zoken e holl ran-vroïou ann Ejipt.

Hag ann Aotrou a galedaz kaloun Pharaon, hag he-ma na lezaz ket bugale Israel da vont kuit.

(Ann heretiked ho deus goall ghemeret ar gomz-ma ker stank er Skritur Sakr: Doue a galedaz ho c'haloun. Mar pec'homp eta, emezho, Doue a zo kaoz, hien eo a zall ac'hanomp. Eun den a feiz vad a oar avoalc'h petra ziniñ ar gomz-se. Doue a lez ann den d'ober he benn, ne ket gras Doue a vank d'ezhan, he fallagriez eo a voug sklerijen Doue enn he goustianz. Doue nekët dalc'het da rei d'ann holl he c'hrasou kre ha nerzuz evel ma reaz e keriver sant Paul ha kalz a re all. Goulenomp ar c'hras-se, mes nann evel eun dra dleet d'eomp). H.

(Eur pennad-all eur vech-all.)

BUEZ SANT PAUL.

(C'huec'hved pennad).

Paul ne c'houezaz ket calz o veza lakat Joevin da Escop en he leac'h. N'eo ket consgoude n'en divije Joevin, furnez, descadurez ha zoken calz santelez: mez n'ez-oa ket kement outhan hag out Sant Paul. Consgoude e labouré goualc'h he galon evid asten al labour taguet gand he vestr; mez Doue euz he velat meür evid an env, hen galv euz a vuez ar bed-man goude eur bloaz escobiach eb-ken. Ar maro caer-ze a reaz da zaëlou Paul redec, rag e Joevin e colle ar guella hag ar muia caret euz ar veleien deut gant-han a Vro-Zaoz.

Goude maro Joevin, Paul a lekeaz da Escop e Castel, Tiernomael, beleg deut ive gant-han euz a Vro-Zaoz. An escop nevez-man a ioa ive eun den carguet a vadelez hag a santelez; mez ne c'houarnaz ket Escopti Leon pelloc'h eguet Joevin, rag ar maro a deuaz d'hen skei var dro eur bloaz goude beza great escop, ar pez a voue evit Sant Paul eur glac'har hag eur ran-galon nevez.

An daou varo-ze arruet a dro-cont, a roaz d'ar zant da c'houzout, e tlie kemer a nevez gouarnamant an Escopti. Euspen-ze ar bobl oll hen goulenne evid Escop. Ar zant, peghen izill benag en em gave, a guemer eta adare he gabel-escop hag he gammel. He garantez evid

he bobl ne voa bet hiscopaz birvidikoc'h: en he gemm oll, e velet o luguerni ar vrassa furnez. Mez, eun nebeud misiou goude, o tont da anaout, n'en doa ket a nerz, avouallac'h evit gouarn an Escopti, e teu adare da ober an dilez euz he garg, en eur lacat en he leac'h eur beleg all deut ive a Vro-Zaoz, hanvet Cetomerin.

Eun nebeud amzer goude-ze Sant Paul a lavar kenavezo da Gastel evid eur pennadic, hag a n'em denn adare da Enez Vaz, evit caout mui-a-ze a amzer da rei d'ar beden. Dilezet en euz ar garg a Escop, evit kemer gouarnamant ar gouent en doa en enezen-ze. Eun dudis voa gouelet ar zant coz-man, guen he ben hag antero doret he gorf gand ar iuniou hag an oll binijennou-all, o prezec hoaz dre he skuerc'h da venec'h he gouent. N'euz fors da bez heur en noz pe en deiz e ranket mont da gana an ofis, Paul a vije ato erruet da ghenta. Cousgoude ar skuisder vraz a guemere a zizec' haz kement he gorf, m'a n'en doa mui an doare euz eun den beo. Ne voa mui nemed croc'hen en dro d'he eskern, hag he zaouarnigou a ioa ken treud, ma velet sclerijen an heol dreis-ho.

En digoll euz a eur vuez ken santel ha ken burzuduz, Doue a roaz da Baul eur sclerijen ar vrassa evid anaout traou an env, ha zoken da anaout an traou da zont. Lavaret a reaz d'he ziskibien e tlie tud caled euz an Normandi dont da Vaz ha discar ar gouent en ho c'hounnar a eneb ar rilijion: ansao a reaz ive d'ar bobl e tlie dont eb dalc' pell, er vro, tud a vrezel hag a foranje an oll douarou tro-var-dro. Rei a reaz ive da c'houzout e vije eur rendael vraz etre Baziz ha Castelliz goude he varo, evit gouzout piou en dije he gorf.

Deut da veza imparfal, ar sant a reaz sevel e kichen ar gouent eun tammic lochen er goudor, evit mont en-hi e-unan da bedi ha da dremen an noz. Eun nosvez eta goude beza tremenet eno er beden an amzer a laca ar re hall da gousket, e teu d'ez-han var mare goulou deiz beza gounezet gand ar c'housket. Mez a veac'h en doa prenet he zaoulagad, setu eun cal ken lughernuz hag an heol e miz mae, o tont en he gabanen, hag o cargua anez-hi gand eur sclerijen ar gaera. Ar c'hannad-ze euz an env, a lavaraz d'ar zant e tostae an heur euz he varo, ha zoken e roaz d'ez-han da anaout, deiz evit deiz, heur evid heur, ar mare ma tlie beza galvet gand Doue euz a vuez ar bed-man. Ar burzud-ze a erruaz en eul leac'h hag a halver hoaz hirio an deiz, Peniti Sant Paul. An den coz santel, a glevaz ar c'healou-ze gand eul levenez ar vrassa, hag a veac'h e c'houlouaz an deiz e-z-a d'he c'has d'he rilijuzed. Ho fedi a reaz da guemer perz en he levenez, dre ma zea pelloc'h he chadennou da derri hag ar baradoz da zigueri evit rei d'ez-han diguemer: goueranti a reaz d'ez-ho oll n'ho dilezche biken, rag pa vije he gorf en douar he galon hag he spered a vije ato en ho c'hreiz. Lavaret a reaz hoaz d'ez-ho beva divorhad, rag m'en doa lakat eur pastor mad d'ho gouarn: « Va bugaligou gheiz, emez-han, « santout a ran dija an devalijen euz ar maro o kuezaz » var va daoulagad; ar ienien euz ar bez, a zo dija en

« lemmet em goazied; la, ho tilezel a rancan, pa fell
« bua Zobe, mez h'em ancomahait ket; dalc'hit souj
« bepred er skuer hag er hentellou am euz roet d'e
« wec'h Ewid' er testeni euz ho carantez, ho tad erruet
« gelab'ha maro, he c'houlen ken digan-e-hoc'h; ha
« m'a hennit he allou, Doue ho figollo eun deiz. »
Sant Paul a reuaz neuze he Zone, hag en eur zavel
ho zontout en eard e lavar: « Pa ma skullio Doue
« vreb'ha he venez d'ez-ho kerkent, eb fallaen na
« rancant eb'ed' er ro, hec'he caer d'he grouer,
« c'frimad' an dud a ioa var al leac'h, o lavaret Amen,
« evel-se hezet great »

Setu pen'az he varv ar zent! An deiz caera euz ho
burzud deiz ho maro. Kinviada a reont euz an douar,
gant al lovenez a gav eur prisonnier, pa gleo cammejou
ar porjer o tostaat, ha trouz an alc'houez o trei er potail,
evit goude d'ez-han an or, hag hen lezel da vont kuit.
Bevomp ive sent, kemeromp Sant Paul evit melezour,
hag heitanvamp ive an douster hag al levenez-ze deiz
ho maro. Q'hu' dreist-oll, tud a Leon, ha c'hu' tud a
dreguer euz an tu-all d'ar mor, pa zigouezo d'ho taou-
lagad, eun vale dre ho tonarou, dont da bara var an
tour, hec'he skuer e Castel, en em erbedit da Sant Paul,
ha goulennat diganhan ma roio bepred he vennoz d'he
Escop, hag ho dihorbro, Breiz-Izel ha BODEUR.

Eur re voutou voutous.

« Doue ann oll a zavaz o sellet oc'h Berc'hed: nak hi a
zouker a lavare lod, nak ez eo koant, a lavare re all. Ar
zouker unan, evit beza m'oa koz, n'oa ket evit miret da
zellez o'hozha lavaret e kuzul d'ar rouanez n'en doa
gwelet ho skoaz eun dimezel ker kaer ha ker mad.

M'ann o'hozha lekez anezhi e leac'h hueta enn eur he
n'oa d'ar zont da zansat gant-han. Ha goude ann dans,
Berc'hed hep beza anavezet, a iez da azeza e-kichen
he c'hoarezed hag a roaz d'ezho avalou-oranjez a ioa bet
digasout euzhi gant ar prins he-unan.
« An taol kenta a hanter-noz, Berc'hed a zavaz euz
he c'hador vrac'h hag a iez kuit, hervez kelenn he
maerouez. Hon-ma a bokaz d'ezhi dre m'e doa sentet
o'hozha neuze ar plac'h iacouank a lavaraz penn-dre-benn
kemeret o'hozha gyelet er palez; ker laouen hag ann heol
e'hozha m'edont o tiviza etre-z-ho, ar markiz hag he
dud en em gavaz enn di, ha Berc'hed ha mont da rei di-

PABLEN.

« ER FOLL O VERZA FURNEZ.
Lafont, ix, s.
« Vre'ha hec'he d'ar
« N'ann'ha hec'he d'ar
« Gued'ha hec'he d'ar
« Euz'ha hec'he d'ar »

N'eus ket furroc'h kentel
Alies her gueler
Er palez, er maner:
Roue couls hag Autrou
A c'hoarz leiz ho guinou
O velet an diot
Ganto ken dichipot.
Diod ha ribler
O deus bouet er maner
Evit ober troiou

gor d'ezho. Neuze ann diou zimezel a lavaraz da
c'hed ez oa bet choloni ha talabao diwar heñp eur
sez oa deut d'ar palez. Gant he mall da vont kuit
taol kenta a hanter-noz, emez-ho, an brinsez e deus lezel
eno eur votez voutous hep gouzout d'ezhi ha map ar
roue en deuz savet anezhi diwar ann douar. An prins
iacouank ne skuize ket o sellet oc'h ar votez voutous-ze
hag he spered a ioa atao gant ar brinsez.

N'oa ket gaou a lavaret
A-benn eunn dervez-bennag goude-ze map ar roue an
gasaz tud euz he berz da glask ar brinsez ken ma vije
kavet; hogen ne oe kavet netra. Neuze ar prins Henri a
lekeaz taboulinou e pep korn ar rouantelez da enkantire
felle d'ezhan dimezi gant ar plac'h iacouank a ioa bet kol-
let eur votez voutous gant-hi: m'em euz fisians, emez-
han, ne vezo ket kavet dioua vezo eaz d'ho zroad lakaat
ar votez-ze. Hag ann dichentil a heiz map ar roue ha
mont da di ar prinsezed, ann dukezed, ar markizezed,
hep tro vad e-bed. Hag hen dont goude da di c'hoarezed
Berc'hed: hep tro vad e-bed ken.

Berc'hed avad a anavez he votez voutous hag a lavar
me garfe gwelet ivez. « Petra vifet a lavar ann dichentil
o trei oc'h he c'hoarezed a rea goap anezhi, petra vifet
ker koant m'az eo? — Ha Berc'hed neuze mont d'he
godell ha tenna ar votez voutous all ha lakaat anezhi hep
kemeret re a c'hrevans. — C'houi eo emont ma klask eb
eme ann dichentil; deut d'ar palez hep dalc' pelloc'h da
gaout ar prins Henri, rak bez'ema o c'hoarzoz ac'hanoc'h! »

Ficht e oe neuze Berc'hed enn eunn taol hag e doare
gant he maerouez, dre c'haloud he gwialennik. Berc'
hed ne lavaraz ger nemet poket d'he c'hoarezed fall ha
lavaret e divije atao sonj anezho.

Kaset oc' d'ar palez hag ann eured a oe great a-benn
eunn dervez-bennag goude.

Goude ma oe distaget dioc'h ann eured, Berc'hed a
c'halvaz he diou c'hoar d'he c'haout, hag ar re-ze ho doe
peb a bried hep dalc' pell.

Ar gorrigez emoun o paouez komz anezhi o bugale
hag ann traou all evel-se n'int nemet marvailloz erac'h
koz, nemet traou da ziverraat ann amzer pa veze e pad
ar goanv, e korn ann oaled e-kichen ann tan a pad
mont da gousket. Ne dal eta kaout aoun' rale
voutou koat, rak karrigell ann ankou, rak ar gannerez
noz, rak ar rounfed, rak ar bleiz-garo.

Tennet euz a Vignoum ar Vugale. A. TROUBE.

D'an itron, d'an saotrou
O deus gobe er palez
Digant prins ha prinsez
O tremen evit foll
E c'hoarzoz goap d'an oll
— Eun diod'ha
En hent dre mal kerze
A toue goas oclh goas
E com'andruïou geroas
Oa marc'hadour furnez,

E roe crenv ar pouez.
 Hag an dud her c'hrede,
 Ha d'he gaout a rede.
 P'hen deveus gret d'an oll
 Eleiz a ardou foll
 Vit ho arc'hant e ro
 Daou c'hourrad neud dezho,
 Ha c'hoas var ar marc'had
 Peb a javedad vad.
 Ar botred a ouele,
 Ar merc'hed a vjele,
 Meur a c'hoaz a c'hinaz
 Ha nebeud a c'hoaraz.
 D'ar re ne c'hoarzent ket
 Muyoc'h vije c'hoarzet;
 Guell oa beza laouen
 Ous ho fennad neuden,
 Pa n'hen devoa n diod
 Ruziet nemet eur jot,

Ha mont kuit d'an daou-lam
 Gant ho fennou pengam.
 Goulen perag ar foll
 A roe neud d'an oll
 A ve fallout tremen
 Evit eur pen azen,
 O clase gout petra zo
 Ebars eur pen goulo.
 Mes, p'e goulo, mar guel
 E lojo tour Babel,
 Ha, couls, arc'h Noe....
 Pebes kemese neuze!
 Ker buan e ti r zod
 E c'fac'h kig er iod.
 Unan eus ar botred,
 Gant he neuden nec'het
 Ha gant he javedad,
 A guemer alvocad.
 An den desket, ker buan

A lavaras d'ezhan;
 An dra-ze zo serifet
 Diabars ho spered
 Hag eno me a lenn
 Petra eo an neuden
 Couls, hag ar javedad.
 An dud aliet mad,
 Ma fell dezo dionall
 Dious! droug eur vech all,
 Etrezho ha peb foll
 A stignô n neuden oll;
 Rag ne ket re pellat
 Dioutho daou c'hourrad.
 Dezho mar d-id tostoc'h
 E raint troiou cam d'ho c'h.
 — Ar foll a verz furnez
 Hag a ro mad ar pouez.

F. P.

T O N I C

(Pevarc pennad).

Ar marc'hadour reder-bro a skuizas souden oc'h ober he vicher. Lacat a reaz en he benn mont da Paris. Eno oa bet c'hoaz, hag eno edo he galon.

An daou veacher a dreuzas Broc'hall oll var droat. Ian-Per a jome da ober eanou er c'hæriou bras; hoguen ne ket evit guerza marc'hadourez oa. Kerkent ha ma veze digouezet e roe ar pez a veze gantho d'ar messaer bihan. Lavaret a rea oa ar potric-ze breur dezhan; he lacat a rea en eur goz hostaliri bennag, hag e c'hourc'hemenne dezhan chom eno d'he c'hortos. Neuze ez ea da glasc lamponet all evelldhan, ar pez ne ket diaz da gaout er c'hæriou braz, hag ar re-ma her sicoure brao da zispign e ber amzer an arc'hant en doa destumet gant calz a boan.

Tonig a c'houzanve oll ep en em glem. Ar vall da velet Paris, ar burzud-ze ervez ar pez a lavare dezhan Ian-Per, a roe calon dezhan. Caout a rea dezhan, eur vech ma vije digouezet e Paris, e vije echu he oll boaniou.

Eur pardaesvez, vardro fin mis du, e velaz ar messaer bihan evit ar vech kenta, ar guær vras-ze e pehini en doa ureet ken aliez. An amzer a ioa goloet ha ien, ha ne gavas ket ar guær-benn tost ker caer ha ma sonje dezhan.

Bale a rejont pell amzer dre ruiou cam ha lous. Riscla a reant var ar pave goloet gant eur guiscat bouillen divalo. Ar vrumachen a voa ken teo ma cuze sclerijen al leterniou. Digouezout a rejont gouscoude en eun toul fall a hostaliri cleac'h ma coanjont gant eur c'hos draillen guig bennag hag eun tam fourmach. O vont da gousket Tonig a voa trist evel ar maro, hag ar marc'hadour a gounnare oc'h kement a voa var he dro. N'edo ket ken nebeut he benn e stad vad. Araog mont e kear oa bet

e cals re a hostaliriou. Beac'h en doa o chom var he zivesker, ha Tonig a voa bet red dezhan douguen ar zamm oll. Evit guir, ar zamm n'oa mui pounner.

Ne brene mui a varc'hadourez, hag ar pez en doa a voue guerzet ep dale. An arc'hant a iea dre ma teue. Tech Ian-Per evit ar vesventi a ioa cresket serijuz, hag an dienez a iea da goeza varnezhan. Tonig a ioa c'hoas buguel, ha ne zonje ket en amzer da zont. Ma en divije great, en divije bet peadra da zizesperi o sonjal en naounevez hag en oll drubuillou en devije da c'houzaon. Gouscoude araog cousket en nosvez-ze e reaz eur pennad lenva. Antronoz, mintin mad, e voue red mont da glasc diguemer e leac'h all.

Ian-Per a baez ar scoden. N'oa ket pounner, mes re e voa c'hoaz evit he ialc'h, hag ez eas kuit en eur c'hros-molat. Bevech ma selle oc'h ar potrig dister ha droug livet en doa kemeret, en em lakea da leskeul eur bern leoudouet, o rebech dezhan he unan an diotach en doa great o rei arc'hant evit eur buguel n'oa mad da netra, en doa beac'h o chom en he za.

« Ama, emezhan d'ar potr, e ranki dirounna da gorf gouscoude, pe te vo contant pe te ne vi ket. Ma na rez ket, ne pezo ket a vara. Ama ne gavi ket a vara en tiez: ama eo red prena. »

Goude beza antromoz lastezennet epad an deiz, e fermaz eun toullic cambr stieruz en unan ar ruiou-ze a Bariz eleac'h ne gaver nemet baleantet, a loj en tiez eno dioc'h an deiz, dioc'h ar zizun, evel ma vez gallet. Ar c'hoarezet griz a ia alies da gas aluzennou d'ar blocadou tiez paour-ze. Hi epken a elfe lavaret peguen euzus paourentez a gaver eno, pe guen izel e c'hell an den coeza. Red eo e ve carantez Doue down en eun ene, evit gallout mont, ep donjer, en tiez, pe guentoc'h er c'hreier-ze, var dro tud brein corf hag ene, evel ma zeus cals euz ar re a gavont enho.

Eur vad e vije bet evit Tonic beza digouezet gant ar

c'hoarezet griz. Hoguen n'en devone ket zoken an heur vad-ze. Ian-Per ne felle ket an dra-ze dezhan, hag evit miret oc'h kementse en doa kemeret lojeiz e ti eur c'hreg a anaie pell a voa, hag a voue ervad ne zigore morse he dor d'ar merc'hed santel-ze. En em lakeat oa en eun ti eleac'h ma reat'hu var ar c'hoarezet mad, ha ma oa desket ar vugale da ober begou dezho pa dremenent ebrou. Setu e pe doull e voue condonnet ar potric paour da jom. Hag arabat eo eridi e lavaromp ama re; kementse ne deo nemet re vir. Siouas! nag a bet buguel bet tennet evelldhan digant ho zud a alle renta testeni d'ar virionez euz ar pez a lavaromp ama!

Ep dale Ian-Per en doa great anaoudeguez gant bandedennadou aclepotet a zaremprede an ti ma edo enha. Ar voue hizez, pe ar vestrez, a voa eur c'hrac'h coz, eur pez divezet hag a zalc'he eun doare hostaliri e traon an ti. Pouchaz a rea bouet gant a bep seurt demoran-chou, ar pez a gave marc'had mad pe evit netra, gant an traou a vez tolet e leac'h all d'al loenet pe en teil. An dud reuzendig a deue da zibri d'an ti-ze a voa vacabanted, lastezennet a veze, guech eno, guech er prison. Ne denent di nemet pa o deveze eur guennec bennag, hag eur igarbez oa evitho caout toen azioc'h ho fenn evithi da veza fall. Aliessoc'h oa red dezho tremen an noz er meingleuziou pe dindan ar pontchou. An dud-ze oll a voa didalvez, eat ho c'horf digantho; ne c'houlent nemet en em vesvi ha pa dlijent mont da zivesvi d'ar bac'h. Ar seurt tud-ze a ioa dioc'h doare Ian-Per. Great en doa diaraog mignoniach gantho, ha brema oa dent adarre d'ho c'hilasc.

Diguemeret e voue evel ma c'hoar tud evelse diguemeret. An nebeut arc'hant a voa chomet gantha a voue teuzet dioc'htu evit nevezi anaoudeguez, hag epad eun nebeud dervezioù ne glevet nemet canaouen ha malloziou al lamponet-ze bete ma coezent dindan an daol gant ho c'horfat.

Ian-Per o veza lavaret d'he guenlastezennet ar marc'had en doa great gant kerent Tonic, e loskjont mil leoudouet, mil malloz o sonjal pet corfad o divije gallet da ober c'hoas gant an daou c'hant lur roet evit ar potr. « Laeret out bet, eme unan anezho; ar guidroc'h-ze ne vezo morse goest da c'hounit eur c'hinaouat vara. »

Ar voue hizez ne zonje ket evelse. Cridi a rea e c'hel-jet lacat ar potrig da c'hounit e ber amzer muioc'h evit n'en doa coustet.

« Eur zantig eo, emezhi; ar zacramant a ve roet dezhan ep covez. Den n'en devezo disfizians anezhan. Lakit-ben da c'huennat an ilizou. Plijout a rai d'an devodezet. »

Ia, mes difennet eo goulen an aluzen, grac'h coz, eme unan euz al lamponet; panefe-ze ar vicher-ze a ioa dioc'h va doare-me.

Ar voue hizez ne blije ket dezhi beza hanvet grac'h coz. Tabut a zavas, ha goude m'o d'oa roet an eil d'eguil lezhanioù evel a ouzer da rei e tiez evelse, evit en em unani, e voue carguet ar voue hizez da guentelia ar messaer bihan.

Tonig, epad ma comzet evelse divar he benn, a voa he unan en he doullic cambr prennet varnezhan. Eno n'en doa couls lavaret na sclerijen nag ear vad. Eno ez en contamet ha stieruz a deue d'he gaout dre eur c'hos foll prenest. Epad an deiz, ar potrig a jome en he za var eur gador da zellet dre ar prenest, ha ne vele nemet ar mo-guet a deue euz ar chiminalou, her pelinta ioa bet boas da velet menezioù, ha da gas he zell ket ha ma c'helle mont!

An dizesper-eta a deue nebeut ha nebeut e calon ar potric. Caret en divije serifa d'he dud. Hoguen ne voue ket serifa; ha neuze, ha pa en divije gouezet ober, n'en divije ket great, rag ar zond ma a deue dezhan ive: va guerzet o deus, hag evelse petra zervich diu!

Ian-Per ne zonje nemeur outhan pa deue d'he gaout, da bell an noz. En em deleur a rea var he stat hag e roc'he bete n deiz. Pa ziliue, ez ea adarre da rei ar memes buez evel an darc'hent.

Tonic, souchet en eur c'horn tro, ne grede ket bihval; Gouscoude n'oa ket bet scoet cals gantha ababue ma voa deut da Bariz. Enouet maro oa avad, hag evelse ois joa gantha clevet ar marc'hadour o lavaret dezhan en doa eanet avoale'h hag oa red dezhan mont da c'hounit he voue.

« Cleo, emezhan, ar voue hizez asikentelio, ha da ziouscounn a goez truez outho ma na zilaoues ket mad. Me ne vezin ket eriz onzit, mar kerez. Lavaret em eus d'as kerent, ha d'ar hel a rip mad d'am guer. Senti avad a ri, peautramant.... Ober a ri ar pez a vezo lavaret did. Me ranc caout arc'hant. Digas arc'hant diu, ha neuze n'e pezo ket da glem ac'hanonme. »

Ar voue hizez eta en em lakeas da guentelia Tonic. Goulen a die an aluzen hag ober meur a dra all evit sachha arc'hant. Evel ne vele ket ar fallagriez euz an alioù a roet dezhan, ne lavaras nann da netra. Hag evel ne allet ket he lacat evel eur paourig oc'h asten he zorn, e voue roet dezhan eur paourig oc'h asten he zorn, zion, etc., hag e tie mont dre guer en eur guinnigen he varc'hadourez.

Ar potrig a iez eta da rede ar ruiou. He vestri a iez dre guz var he lerc'h da velet petra rae, hag eur pennad mad her c'blevaz o crial dre ma zea, gant eur vouez glac'haruz: *paper liziri; eur guenneg ar c'haer* (Eur pennad all- eur vech all).

Hano ar Zent evit ar Sizun-ma

- DILLUN 6 Mae. — Sant Jan dirag an or latin
- DIMEURS 7. — Sant Stanislas, escop, ha merzer
- DIMERC'HER 8. — Sant Mikeal oc'h en em ziskuez var eur menez.
- DIZIOUN 9. — Sant Gregor a Nazians, escop, ha doctor euz an Ilis.
- DIRGUENER 10. — Sant Antonin, escop.
- DISSADORN 11. — Sant Marc, avieler.
- DISSUL 12. — Trede sul goude Pasq. Patronañ Sant Joseph.

Abostol ar zul.

Va breudeur ker, oc'h alia a ran, evel tud estren ha divroad, d'en em ziuval oc'h goal ioulou ar c'hig pere a ra brezel d'an ene. Renit, etouez ar baiantet, eur vuez pur ha divlam, evit na lavarint ket a zroug ac'hanoc'h, n'ho kemerint ket evit tud dizuch, mes en eur velet hoc'h oberou mad, ma rentint gloar da Zoue en deis ma teui d'ho bizita.

Bezit eta, abalamour da Zoue, sentuz oc'h kement o deus da c'hourc'hemen deoc'h; oc'h ar roue, abalamour m'en deus pep gallout; oc'h ar re a c'houarn euz he berz, evel oc'h tud digasset gantha da gastiza ar re a ra an droug ha da rei skoazel d'ar re a ra ar mad.

Rag Doue a fell dezhan e teufac'h dre hoc'h oberou mad da zerra ho guinou d'an dud diskiant ne ouzont ket petra a leveront. Libr oc'h, ne ket da ober an droug ha da c'holo ho coal oberou, mes libr oc'h evel servicherien da Zoue.

Rentit honor da hep unan; carit ho preudeur; ho pet doujans Done; respetit ar roue.

C'hui, servicherien, sentit oc'h ho mistri, doujit. hi e pep guiz, ne ket epken ar re zo mad ha dizroug, mes zoken ar re so kivioul hakintus. Rag kementse a blij da Zoue.

(Kenta lizer Sant Per. II. 11.) G. M.

KELEIER.

An Aotrou'n Escop a Guemper en deus comanset he dro evit couzoumenna dillun 29 ebrel.

Ervez liziri a Rom, ouспен pevar c'hant escop o deus discleriet a vrema e tlient mont di evit ar gouel an 29 a viz even.

An Aotrou Hugonin, escop nevez Bayeu, a dle beza sacret ar c'henta a vis mae. An Aotrou Gros, escop nevez Tarantez a vezo sacret er memez devez. An Aotrou Foulon, escop nevez Nancy a vezo sacret ar c'huoc'h a vis mae. An Aotrou Thomas, escop nevez Rochel, a vezo sacret ar pevarzeg a vae. An Aotrou Lascases, escop nevez Constantin, so bet sacret dissul ar C'hamzimodo.

An Aotrou Mellon Jolly, arc'hescop Sens, en deus roet he ziscarg, hag he ziscarg so recevet gant ar Pap.

Deut eus kelou abers ar re so eat d'an douar santel. Ar veach so great ep darvoud, ha brema ema christenien ar sao-beol ha christenien ar c'huz-heol o pedi var eun dro e kichen bez hor Zalver.

An niver euz ar re so bet o sellet oc'h an exposition vras, dissul ha dillun Fasc a zao en tu all da c'huezeg ugent mil.

Abaoue ma zao an Aljeri d'ar Frans, ez eus cals europidi o chom er vro-ze. Niveret int bet n'eus ket

pell, hag ez eus cavet daou c'hant seiteg mil, nao c'hant deg ha pevar ugent. Var dro daouzeg mil ha seiz ugent so eat di da chom. Euz ar re so eat di da chom ez euz cals muioc'h a verc'hed evit a voazed; var dro cant mil maouez, ha var dro pemp mil ha daou ugent goaz epken. An europidi so en Aljeri so eat di euz a veur a vro. Rannet int evelen tost da vad. Var gant den ez eus c'huoc'h hag antercant euz a Frans, c'huoc'h varnugent euz ar Spagn, seiz euz an Itali, pemp a enezen Malt, tri euz an Alemagn, ha tri euz a vroiou all.

E Bad ez eus maro eur vaouez hag e doa pevar bloaz ha c'huoc'h ugent. Eur baourez oa, hag epad daouzeg vloaz ha cant ne deus great ken micher nemet clasc he bouet.

An amzer a zalc'h ato da veza etre daou, kentoc'h ien evit clouar. An edou en em glemer anezho e lec'hieunou. Evelse e kerne ar segal so eat a blasou gant ar goan. An doare euz an eost a zeu ne deo ket eta euz ar guella, hag an ed ne oufe ket mancout da jom ker.

Petra bennag gouscoude ma zao bet criz an amzer bete vrema, e caver lugumach ha frouez abred da zigas d'ar marc'hajou.

BROZAOS. — Eur gazeten protestant a Vrozaos a lavare n'eus ket pell. E brozaos, hag hi protestant, ez euz seis cant ilis pe chapel catolic, tregont couent goazet, cant couent merc'hed, eun niver braz a scoliou catolic, eun niver braz a veleien, meur a escop ha meur a escopti. Relijion Rom so deut mad da gals euz ar re vraz a vro zaos. Cals tud a reng huel a ia da gofez. En darnvuia euz hor c'heriou braz e velomp kementse. Caeroc'h so c'hoas. An Dukez Kent, mam ar Rouanez, so maro er relijion catolic. Var he maro e lavare d'he merc'h: « Na ancounac'hait ket ez eo bet Brozaos galvet guech all douar ar zant. Doue a fell dezan e kemerfe adarre an hano caer-ze, hag e casfe ar gaou kuit pell diouthi. Ar vadelez, al lealdet, hag an doareou mad all euz an ene pere na gaver mui etouez ar saozon, ho c'haout a raint adarre kerkent ha ma tistroint da efa d'ar feunteun a vuez o deus, an dud diskiant, lezet da vont da hesc.»

Tennet euz ar gazeten Revue de la presse.

G. M.

PRIZ AN ED.

Table with 2 columns: KEMPER and PONT'NABAT. Rows include prizes for 15th and 25th of the month (Ebril) for various categories like Guinis, Segal, Eiz, Ed-du, and Kerc'h, with prices in francs and centimes.

Ar Gerant: AR. DE KERANGAL.

Kemper, moulet gand AR. DE KERANGAL, Mouller an Escopti.

FEIZ HA BREIZ,

KELOU A BEP BRO, HA KENTELIOU VAR BEP TRA,

DIGASSET BEP SUL

Da guement Christen a goms ar brezoune.

Eun Abonnament d'ar Gazeten a goust:

Table listing subscription rates: Evit eur bloas (DAOU SCOUBET), Evit c'huoc'h miz (EUR SCOUBET), Evit tri miz (C'HUOC'H REAL), Eur gazeten ebken (DAOU VENNEC).

Ar baalamant a dle beza great araog caout ar gazeten.

KEMPER, 11 Mae 1867.

Petra bennag ma zeus cals kem etre tud kear hag an douar ar meaz, petra bennag ne zell nemeur oc'h al labourerien douar ar peza dremen er c'heriou braz, ar peza dremen er c'herion a jell, gouscoude avechou servichout er skrien d'an dud givan ar meaz, ha kementse eo pa reont ho deventou a gristen. Neuze ar c'hem so etre al labourerien tud dister, ervez ar bed, tud hag o deus peul hessa nebent a zavez hag a zescadurez, hag ar re vraz euz ar c'heriou, tud a reng huel, tud goueziec, tud a zavez ar c'ham-ze a ia da netra. Pa vezer daoulinet er c'herio pidi, pa vezer azezet oc'h taol Jesus evit digementse he zalver ep he galon, an oll a zo breudeur, an oll so bugale da zoue. Gouscoude pa veler an dud a reng huel ar pennon braz-ze euz ar bed, ho bruched goloet a groazion, an dud-ze brudet dre ho skiant hag ho gouezieguez pa ho gneler daoulinet e kenver hag e mesc ar re baoura ha distera, kementse a ra ato vad da velet ha da glevet.

Hoguen kementse ne blij ket d'an dud difeiz a falle dezho rei da gridi ne deuz oc'h hevilla ar relijion nemet merc'hed ha bugale, ne deuz a vir gristenien etouez ar voazet nemet tud divar ar meaz, micherourien baour, tud dizesc, tud ha ne ouzont netra. Mes pa veler er c'heriou braz, evel e Rom hag e Paris, tud euz ar renkou huela, tud euz ar re vouezieca o taoulina dirag vikel Jesus-Christ, o vont reglet d'ar prezeguennou epad meur a zizun, oc'h ober ho fasc evel tud paour ha tud dizesc, neuze eo red d'an dud ep relijion serra ho guinou, rag an traou-ze a dremen dirag daoulagad an oll. An oll a voar ez eus zoken e Paris eun ilis bennag eleac'h ne vez nemet goazet er prezeguennou, ha goazet euz an dibap, da lavaret eo ar peza so a honorapla hag a vouezieca e kear-benn ar Rouantelez. Ha ne ket unan bennag pe eur c'hant bennag epken, mes meur a vil eo a heuil ar prezeguennou-ze.

ALIOU.

Ar scrijou a ve c'hoant da lacat er gazeten a dleer da adressi oll d'an Aotrou MORVAN, Beleg e Kemper.

Ar paeamanchou a dleer da adressi d'an Aotrou SALAUN, ebken. An abonamant a guemeret e tli an Aotrou SALAUN, librér, ru Kereon, e Kemper.

BOURDEL. — Comzet on euz euz ar solaniteou caer so bet e Amiens hag e Dijon, en honor d'an Aotrou escop Daveluy ha d'an Aotrou Bretenieres maro evit ar feiz e Coree. An Aotrou Beaulieu, ganet e Langon, a zo bet merzeriet eno ive, hag ar C'hardinal Arc'hescop a Vourdel a dle ober ive en honor d'ar merzer-ze, eur gouel henvel oc'h ar re so bet e Dijon hag e Amiens.

LYON. — Eur servicherez dister a escopti Lyon a so nevez maro hag e deus lezet daou vil lur gant he ilis parrez evit lacat guer nevez var brenestou an divrec'h. Abaoue he bugaleach e rea poan dezhi gulet ar brenestouze dirapar. C'hoant e doa da velet guer nevez var an daou brenest. Hoguen evit caout guer a zoare e voa red daou vil lur, hag hi ne doa netra. En em lacat a reas da espern kement guennec a alle da c'hont. Ar mui aoun e devoa oa da vervel araog beza savet ar zom a voa red. Doue en deus roet ar c'hras dezhi d'he zavel araog dont d'he guervel.

ROAZON. — Breuriez c'hoarezet vian ar beorien so brema o sevel ho c'hanvet ti. E daou ugent vloaz ep ken sicour nemet digant ar brovidans, digant an dud vad, ar c'hoarezet so eat an niver anezho da drivac'heant Gallet o deus sevel cant ti, ha repui en tiez-ze deg mil den coz, ho maga, ho guisca, rei dezho kement o deus izom, hag ar peza da dal calz hirroc'h c'hoas, ho lacat da gaout eur maro christen. Ne de ket eta maro c'hoaz ar garan-terez e calon ar gristenien catolic.

ROM. — Eun niver bras divent a dud so bet e Rom er bloa-ma evit ar sizun-santel. Ar zoudardet eat di evit servicha ar Pap a ro scuer vad da gueriz. Ho gulet a rer dalc'h mad en ilizou hag er prezeguennou, ha ne ket evit sellet oc'h an traou caer so en ilizou-ze eo ez eont enho, mes evit pidi a greiz ho c'halon.

Eun dervez e prezet hent ar groaz er C'holizee, ouспен daou vil soudart a voa oc'h heul ar brosesion

etouez ar gristenien all. Eun tad euz an Orator a Bariz a brezegue bep station. Epad ma prezegue, eun den a garre unan euz ar scaliou bras so eno, en em lakeas da zevrez an tad o comz hag oc'h hija he zivrec'h evel-dhan. Den ne lavaraz guer ken na voa echu hent ar groas. Mes goude ar venediction e voue eur boan vraz o viret oc'h ar zouavet d'he strinca euz al leac'h ma voa d'an douar. Ar breladet evel kent a deuaz a benn d'ho lacat d'he lezel da vont kuit. Unan euz ar breladet a lavaraz dezho : Va mignonet, en em gonsolit. An den-ze en deus discleriet ne voa ket euz a Frans, mes euz a spagn.

ARRAS. — Eur brotestantez iaouanc euz an Alemagn, e deus troet kein d'an errol evit dont d'ar guir ilis. Unan euz ar vikelet vraz en deuz recevet he le e chapel an ursulinezed. Bez'e doa evit maeronez eur c'hoar dezhi deut ive da veza catolikez brema ez euz eun nebeut miziou. Ar bempetprotestantez eo savet eus a denvalijen an errol abaoue nebeut. Diou euz ar pemp-ze o deus goulennet beza recevet e reng al leanezet e couent an ursulinezed a Arras.

HISTOR ZANTEL

(DAOUZEKVED PENNAD).

GOULIOU ANN EJIPT.

EXOD. X. — XI.

Navet gouli, — Ann devalijen.

Aheurtamant Pharaon a dennaz var he vro eun naved gaolen. Ann Aotrou Doue a lavaraz da Voizes : Astennit ho tourn etrezeg ann envou, evit ma teuo ann devalijen var zouar ann Ejipt, hag eun devalijen ken teo, ma vezo gallet touch out-hi gant ann daouarn.

Ha Moizes a astennaz he zouru etrezeg ann env, hag eun devalijen spountuz a c'holoaz holl zouar ann Ejipt epad tri devez. Den na velaz mui he vreur, ha na finvaz euz al leac'h emedo pa zeuaz ann devalijen. Hoghen e kement leac'h ma oa bugale Israel o choum, ar sklerijen a bare.

(Ar zonzj hepken euz ann devalijen-ze a ra aoun d'ann den. Beza tri devez ha teir nosvez hep guelout ann disterra sklerijen ! Koulskoude Moizes na verk ket ama ann oll draou heuzuz a c'hoarvezaz neuze. Ar Speret Santel, e levr ar furnez a lavar kalz muioc'h. « Epad emez-han, ma krede ann dud fall ec'h hellent ober ho mistri var ar bobl santel, e oent dalc'het ho-unan prizounerien enn ho ziez gant chadennou ann devalijen ar re eun nozvez hir. Mar klaskent tec'het a zirag Doue pehini a ren pep tra, e kouezent d'ann douar... Spountet horrubl, souezet-mor, ha strafuillet holl. Ar c'haioiu douar e pere e felle d'ezho en em guzet, n'ho difennent ket dioc'h ar spount; rak trouzou a glevant a ziouc'h ho fenn hag ho strafille. Ha spesou heuzuz, persounachou trist en em ziskoueze d'ezho hag ho c'harghe a

spount. Tan ebed, daoust pegher kre e vije, na helle rei d'ezho ann disterra sklerijen ; na lughern kaer ar stered na helle ket skleraat ann noz digonfortuz-se. Eun tan iskiz a skoe enn ho daoulagad evel luc'hed ; tan leun a spount ; ha dallet gant ann aoun, e krede d'ezho guelout traou effreuzoc'h c'hoz eghet ar pez a velent. Neuze e oe guelet ne oa netra ardou ar vagicianed ; hag ho briz-furnez, gant pehini en em fougheent a gouezaz enn dis-meganz. Rak ann dud-se pere en em ghenighe da lennel ann aoun hag ar strafuill dioc'h sperejou tud hanter-varo, karghet ho-unan a spount, a choume ho-unan droulivet, hag hanter-varo, eur c'hoarz ho guelet. Ha pa na zeue ket ar spesou pe ann teuziou d'ho spounta, eun aneval o tremen, eun aer o c'houibana eun avel o c'houeza, eul labouz o kana ho strafille, hag e krenent, da vervel gant ar spount. Rak eur goustianz fall a zo aounik. he zesteni he c'houndaoun, hag e tiskred bepred ez euz eun drouk bennag o tont var he lerc'h... er bed holl e leac'h all e pare eun heol kaer, ha netra na vire oc'h ann dud da ober ho labourou. Var ann Ejiptianed hepken e oe taoled eun noz pounner ha du-pok, skeuden ann devalijen peur-baduz a dlie, siouaz ! ho grounna er bed all. »

Neuze Pharaon e c'halvaz Moizes liag Aaron hag a lavaraz d'ezho : It, grit ho sakrifis d'ann Aotrou. Ra choumo hepken er ghear ho tenved hag ko saoud ; ho merc'hed hag ho pugale vihan a hell mont gan-ehoc'h. Nann, prins, eme Voizes, leuskel a reot da vont gan-eomp ann anevaled a lazer, hag ann traou all a zeve en enor da Zouc, evit ma raimp gant-ho eur zakrifis d'ann Aotrou hon Doue. Hon tropellon holl a ielo gan-eomp, ne choumo ket eur c'harn diout-ho var holl lerc'h. Ezom a zo anezho evit ober lid braz ann Aotrou hon Doue ; pa eo guir na ouzomp ket petra a dle beza sakrifiet, ken na vezimp arruet var al leac'h.

O klevet kement-se, kaloun Pharaon a galedaz muioc'h-vui, ha ne fellaz ket d'ezhan a-grenn ho lezel da vont kuit. Hag e lavaraz da Voizes : En em dennit diouzin, ha diouallit ne deufac'h mui dirag va daoulagad ; rak daoust he zevez en em ziskouezot dira-z-oun, e var'lot.

Moizes a respountaz : Great e vezo evel ma livirit, ne velinn mui ho tremm. Hoghen selaouit ar pez am euz da ziskleria d'ehoc'h c'hoaz, pa'z eo hou-ma ar veac'h diveza d'in da gomz ouz-hoc'h. Setu petra a lavar ann Aotrou-Doue : skei a rinn c'hoaz gant eur voalen Pharaon hag ann Ejipt, ha goude kement-se e lezo ac'hanoc'h da vont kuit. Eun nozvez, da hanter-noz e tiskenninn ebarz en Ejipt, ha pep kenta-ganet e bro ann Ejipt a varvo, adaleg map hena Pharaon, pehini a zo azezet gant-han var he droun, bete map hena ar vatez a zo o trei ar vilin, ha beteg ar re ghenta-ganet euz al loened memes. Hag e vezo eur c'hri-forz e holl zouar ann Ejipt evel n'euz bet biskoaz bete vrema, ha na vezo biken goude. Mes etouez bugale Israel ne chilpo ket eur c'hi zoken, na den na loen n'en devezo droug ebed ; evit ma oniot dre bebez burzud e oar Doue lakaat kemm etre ann Israe-

llet liag ann Ejiptianed. Hag hoc'h holl zervicherien, ann dud-ma, (otrei oc'h offiserien ar roue) a ziskeno d'am c'havout ; hag ec'h adorint ac'hanoun o lavarout : It er meaz euz hor bro, c'houi hag ar bobl-se a zo dindan ho peli, goude kement-se ez aimp er meaz euz ho rouanlez.

Goude beza komzet evelse, Moizes, droug braz enn-han, en em dennaz azirag Pharaon, hep gortoz respont ebed digant-han. H.

(Eur pennad-all eur vech-all.)

Ar mad a helfe beza great, er c'heriou, d'ann devezourien ha d'ar vicherourien.

Evid-oun-me, pa daolann eur zel war ar rummou tud-ze, ne d-ounn ket evid en em virout da veza glac'har- net meurbet : rac gouzout ha gwelout a rann penaoz e ve tremenet ann amzer gant calz anezho. Da ghenta, petra a reont-hi, peurvuia, euz ar zul ? Ar zul, deiz a heden, hag a ziskouiz, a zo evit meur a hini, eunn deiz a zizuz, hag a bec'hed.

Nag ar dad mad ha cazantezuz a bent all, a zeu da veza eunn tad, eur pried criz ha dinatur ! En em goll a ffont gant ar gwall gompagnunezou. E-le'h mont d'ann ilizou, evel ma ra pep christen mad, ar re-ze a ia d'ann hostaleriou, ha pa zistroont divezad d'ar ghear, ema collet ho fenn gant-ho.

Oh ! gragez, oh ! mammou paour euz a Vreiz-Izel, truez am euz ouz-hoc'h ! Hag hi so trist ha glac'haruz ho buez war ann douar ! Aliez n'hoc'h euz na dillad da lakaat enn dro d'e-hoc'h, enn dro d'ho pugale ; na keuneud da ober eunn tamm tan, evit tomma ho pugalignou vihan, na boutou da lakaat enn ho treid hag e treid ho pugale ; na bara da zibri ho-unan na da rei d'ho pugale a glevit o'rial gant ann naoun, na peadra d'ho c'hass divezatoc'h da ziskerier. Ha koulskoude ma na ouzont eur vicher bennag, penaoz ec'h hellint-hi, er c'heriou, goude ho boed hag ho sicour enn-ho cozn ? Ha peracta kement a vizer hag a baourentez ? Dre ma teu ho friejou da zispign enn hostaliri, d'ar zul, hag alies c'hoaz d'al lun, ar pez ho deuz gouneet enn deizioù all. Nan, nan, n'euz nemed ar gragez, a vev gant eur pried mezvieg, a helfe anaout kement ho deuz da c'houzant noz-deiz a berz ezech dirollet ha collet gant ar gwinardant.

N'euz ket c'hoaz pell, en eur ghear ne hanvinn ket, eur goaz hag eur c'hreg a oa digasset dirag eur barner. Goude m'ho devoa discleriet ho hanoiu, ar barner a c'houlenn digant ar c'hreg :

— Mari-Yvon, Per aze war ar skabel, ho goaz eo d'e-hoc'h-hu ?

— Ia, Aotrou, ma goaz eo.

— Ha gwir eo ez oc'h gwall-gasset gant-han ?

Ar c'hreg reuzeudic, ar spount pintet war he bisach bevech ma taol eur zell war he goaz, ne respount gher.

— N'ho pezet ket aoun, comzit freaz ha livirit ar wirionez penn-da-benn.

— Ia, pevar bloas so, ma goaz a c'hwall-gasset ac'hanoun noz-deiz. Abaoue ann amzer-ze n'am euz ket bet na peoc'h na repoz. Blonset eo ma c'horfadaleg ma fenn beteg ma zreid gant ann taolioù baz hag ann taolioù botez am euz recevet digant-han.

— Pegeit so abaoue ma'z oc'h dimezet ?

— Pemp bloaz, na vo ket pell, Aotrou.

— Ha bez' hoc'h eus-hu bugale ?

— Ia, eur c'hrouadur tri bloaz am euz.

— Ann eizved war-n-ughent euz a viz east, ho koaz, ha n'en deuz-hen ket ive skoet gant ho crouadur ?

— Ia, Aotrou, ha setu aze ar pez a ra ma brassa glac'har. Ma n'en defc skoet nemet war-n-oun-me ? Me so boazet d'ann taolioù. Mes ma c'hrouadur bihan ! He dad en deuz roet d'ezhan taolioù war he ghear, ha goude en deuz-hen discleriet d'ann douar. Me lavare d'am goaz : ma mignon kez, discarg, discarg war-n-oun-me da goler, hag espern da vihana ar bughel paour-se. N'en deuz ket selaouet ac'hanoun, mes croglet en deuz enn-ounn, ma zaolet d'ann douar, ha pilet gant he dreid. Pebez horrol, pebez crisper ! Ha kement-se a vleur e meur a di, dreist holl, e-touez ar vicherourien er c'heriou.

Koulskoude ne vije nemed hanter-zroug, mar canfe ar gragbez caout mui a relijion hag a batianted.

Setu ama ar pez a zo erruettenn eur ghear vihan. Eur c'hreg, mes eur c'hreg devot ha christenez vad, a bede hag a dostae ouz ar sacramanchou, a oa dimezet da eur mezvier n'en doa ket he bar.

Bep noz e teue d'ar gher mezo dall. He c'hreg, goude beza roet ho c'hoan d'he bugale hag ho lakeet enn ho gwele, a choume d'hen gortoz. Derc'hel a rea he goan tomm ouz ann tan. Pa errue ann ozac'h, hi ne lavare gher. Goulenn a rea hepken digant-han mar en divije c'hoant da zibri. Ma ne ghemere netra, ar c'hreg her sicoure d'en em ziviska hag hel lekee enn he wele, evel eur c'hrouadur, mes gher ebed a grenn ne lavare.

Goude eur bloaz pe zaou tremenet evel-se, ar mezvier-ze a zeuaz da zonzal, hag o tiskenn enn-han he-unan, e lavaraz : mes me a zo eun den ar c'hriha hag ar falla so bet biscoaz. Me am euz aze ar c'hreg ar wella, ar garantezussa, ha ne rann nemet poan hag anken d'ezhi. Red eo d'in chench ha renonc da zampred ann hostaliriou hag ar gwall gompagnunezou. Mont a ra da goves, distrei a ra war ann hent mad, ha biken mui goude n'eo bet gwelet mezo. He c'hreg he-unan eo, e deuz contet kement-se.

Oh ! ma teufe calz a c'hraghez da heulia skouer ar vaouez-ze, me zonzj d'in e rafent chench buez da unan bennag euz ho ezech mezvieren.

Setu aze ann droug, ha setu aman ar pez a reeur-enn eur ghear a anavezann evit distrei ann darn-voia euz ar c'hoazed-se dioc'h ann hostaliriou hag ar gwall gompagnunezou. Bep sul, goude creizteiz, da beder heur pe war dro, ez int pedet da zont enn eunn iliz, pe eun eur

chapel bennac. Eno gand eur belec e ve canet eur gousperou berr, tri psalm hepken hag ar *Magnificat*. Ar belec a breg hed eur c'hart-heur pe ughent minuten. Goude-ze pepini a hell sevel d'he dro, kemer ar goaz, mar en deuz eunn dra bennag da lavaret, pe da lenn war ar paper. Uan a ve clevet o teski penaoz ec'h hell pepini beza euruz enn he stad hep beza pinvidic, hag e cont histor eur famil vad bennag eunn deuz anavezet. Eunn all a zesk ann doare da virout iec'hed ar c'horf ha iec'hed ann ene, hag e comz euz ar mad a denneur euz ar beden, euz ar sacramanchou, hag euz eul labour e crogher enu-han enn eur ober sin ar groaz hag enn hano a Zone hag ar Verc'hez-Vari.

Hema, o veza bet soudard hag er broiou pell, a lavar ann traou mad ha kaer en deuz gwelet er broiou-ze. Hen-hont so bet e pevar c'horn Franc, e kement kear vraz a zo evit diski gwelloc'h he vicher, hag a lavar en deuz bet ann eur-vad d'en em viret e doujans Doue, dre m'en devoa devotion d'ar Verc'hez-Vari, ha ma tastaë ouz ar sacramanchou. Eunn all goude holl a ali ar re iaouanc da veza aketuz ha sentuz ouz ho mistri, memes ouz ar ze a vije euan nebeut rust ha garo, etc. Warlerc'h kement-se e ve canet eur c'hantec enn enor d'ar Verc'hez-Vari ha roet benediction ar Sacramant. Pephini goude en em denn hag a zistro d'he di. Eno e cav he goan preparat gand he c'hreg, rag hou-ma a oar

AR VESVENTI.

Selaout kristenien,
Ha paour, ha pinvidik,
Dreist oll, c'houi mevierien,
Selaout va c'hantik...
M'em euz c'hoant e kasafac'h,
Kraek ha berr e tilesfac'h
Ar vesventi dizaour,
A grog druz er Vretoned,
Hag a goust d'ar vignoned
Oc'hpenn arc'hant hag aour.

Mesventi, tech mezuz,
E peb leac'h abeget,
Mesventi, tech mezuz,
E peb bro milliget:
N'ouffe kristen e nep iez,
Kounta piz an droug a rez!
Hep rei pell da c'hortoz,
Stankoc'h evit na gredor
Te ra koll danvez, honor,
Iec'hed, buez, baradoz!

Mevier oc'h, va breur keaz!
Kit, hag ho pe forz traou,
E kear ha var ar meaz
Euz ho ti c'houi rai kraou...
Ho tud koz ho d'oa leve,
Gant tron ho lorc'h a veve...
C'houi didra, reuzeudik,
Da glask ho tam hep dale,
Daoust deoc'h, a ranko bale,
Evel ar map prodik.

E c'hiz eur vogeden
A nij gant an avel,
E c'hiz eur glogoren

Ne ra nemet sevel;
Evelse gant enn ever,
Nemet calz re n'her gueler,
E teuz, e trodillo
Peb mad oll e banneou,
Taol, skaon, armel, gueleou,
Chatal, greun ha kolo.

D'am zi, c'hoaz mar ranker,
Guell eo ganen tan voall,
Eget eur c'hoz lonker,
Peurvuia sklisen fall...
An tan, me oar, ben devo;
Hag eur mesier hen evo...
Mein, ludu, leur an ti
Varlerc'h an tan a gaver;
Varlerc'h eur c'hanfard ever
A boan e chom al li.

Eur vech lazet an tan,
Nep trouz mui da glevet,
Ha me, siouaz! paour ran,
Eaz me hello kousked...
Eur mevier, endra vevo,
Hep distag am bourrevo...
Loen fall, penn direzon,
Lonka rai va oll danvez,
Brevi va c'horf digernez,
Ha ranna va c'halon!

O Jezuz, nag a zoan
E d'euz greg eur rouller!
Ha c'houi ve tud a boan,
Bugale eul lonker!
Kaer hoc'h euz corfa, espern...
Sun'ra mel hoc'h eskern...
Gant ho koad eo livet

da begouls e tle dont he goaz d'ar gher. Lavaret e ve goude ar pedennou, ha dioc'h-tu ann tad, ar vamm hag ar vugale a ia da gousket. *Le Pelaijer 57* M. D.

LAOUIK AN DERO.

Petra eo, a lavare d'in en ders all va c'hamarad Laouik an Dero, petra eo ne gaver mui en hon ilizou eur c'hantik a ganet guechall, n'euz ket pell c'hoaz, gant kement a galon e mesk ar Vretoned, ha n'euz bet biskoaz muioc'h a ezom da gana eget en hon amzer? Guechall ar vevierien a ioa dibaot aoualc'h e darn euz hor parresiou; brema ho c'haver a bep tu, da zul, da c'houel, da zeiz marc had... Petra eo eta neganer mui kantik ar Vevierien? Ha n'eo ket poent, tremen poent ober eun tammik mez d'ar ganfarted everien a zao ken huel ho fenn, abalamour, me gred, ma'z eo ker braz an niver anezo? Guir eo, kantik ar Vevierien a zo bet great guechall gant eun den a vouie gwelloc'h ar gallek eget ar brezonek. Abalamour da ze, va mignon, me am euz kemeret ar boan da lakaad e brezonek mad, freaz, eur c'hantik a zo en-han kalz a virioneziou kaer, ker kaer ma ve eur pec'hed, pe dost, he lezel da vond da goll. Guelit, va mignon, lennit, ha, mar bez red, kempennit va zam labour.

YAN AN DALL.

Kement a ev ar reusken;
N'hellit kaout eur boulfren
Ganthan na vez lipet.

Nebend eo koll danvez;
Mevier, kaerroc'h tenzor,
O lonka a gollez,
Me lavar da enor...
Allaz! ia, va c'heaz komper,
Ac'hano-d-te mar komzer,
Great eo, great mad da dro;
N'oud nemed eun divezet,
Gant peb marmouz disprizet,
C'hoaz ha mounoun ar vro.

Tra iskiz, tra mezuz!
Oll soublomp hor pennoù...
O heol madeleuz,
Na bar mui en envou...
Ha ni tud eur vro gristen,
Ni vel, siouaz! ac'harden,
Hag a zeou hag a gleiz,
O tivoan mevierezed,
O sevel lonkerezed
Dre bevar c'horn hor Breiz!

Ia, merc'hed a veler,
Re iaouanc ha re goz,
Ia, merc'hed a gaver,
hag en deiz, hag en noz,
A darc'hoez, a rank termad,
Ker reud e vez ho c'hofad,
A boan a hell bale,
A dourt, a gann ar c'hleuziou,
A gousk a roc'h er fosiou,
Evel en ho guele!

(Eur pennad all eur vech all).

an 2 1916...
...
... (Pemped pennad).

Ar goan a oa o tont, ha gantha ar jenien; hoguen Tonic a oa ket rivide. Pa elle caout ear vad e sonje nebeut en ho boan. Chom a reas sonzet, hag estlamet da zellet he stalhou caer ar varc'hadourien vras. Ar c'hanoziou a vele o vont hag o tont a rea plijadur vras dezhan. A vechou e venne beza flastret gantho; hoguen me ne gaver mui a van a guementse.

An devez kenta, pa velaz an noz o tont, e sonjas petra zigazie d'he vestr. Siouas, n'en doa guezet netra. O c'hanoziou en doa tremenet an devez. Neuze e comansas hezañc'he, hag en eur zont etrezeg he lojeiz, e kinnighe e baper d'an oll. Mes glao a rea, ha pepini en doa mall d'en em denna euz a zindanha.

Gouscoude mouez ar potrig a ioa ken truezus, ker glao ha m'ha mastenaz eun den mad bennag da rei an aluzen dezhan en eur dremen, ha pa zigouezas en he lojeiz, en doa dige guenneg ep beza guezet begad marc'hadourez. An Per, anter-vezo, en doa c'hoant grosmolat o velet m'ha boan m'ha m'ha deg guenneg da zigaz dezhan. Mes ar vourc'hizez ar zavas gant ar potrig hag a lavaras: petra deg guenneg so deut gantha, hag he varc'hadourez ne ket heulc'heul Paris ne ket bet savet en eun devez, hag ar potrig magne ell ket ive beza goaz avoalc'h an devez kenta.

Tonig eta a voue meur a zizunvez o redek ruiou Paris, hag evel ma save ar vourc'hizez gantha, ne veze ket bazatet nemet. Ober a reaz anaoudeguez gant potredigou all evel d'hañ, hag he blijadur oa en em gaout gantho ha mont d'ho heul. An anter-euz an amzer avad ne entente ket ar peza lavarent. Guerion troet o doa evit caozeal etrezho, ha comz euz ho zroion caer, ha c'hoazin a reant da Donic dre ma chome digor he c'hinoù gantha ep gouzout petra lavarent.

Etoñez ar botred-ze e voa unan pemzeg vloaz hag a deuas da veza dreist ar re all camarad da Donic, hag hen d'enne pa felle da unan bennag euz ar re all skei gantho. Ar c'habiten oa euz ar vanden. A vechou da bardaez, pa vezo bet fall dervez Tonic, e roe dezhan eun nebeut guenneien, bete pevar real derveziou a veze; hag ar potrig keas he voue ket euz a beleac'h e tenne he gamarad an arc'hant-ze.

Eun devez gouscoude her gouezas. Ar c'hanfart a voue paket he zorn e godel eun den coz. Eur serjant polis a zigouezaz, hag a gavas ialc'h ar potrig coz e goasc calabousen al laer iaouanc, elc'ac'h ma en doa he c'huzet gant ar brassa ijin. Tonig a velas neuze pe seurt micher a rea he gamaradet, hag a serabaz ac'hano en eur grenad gant he aoun. Redez a rea, hag e cave dezha dalc'h mad ez oa unan bennag o vont da gregui enha. Caout a rea dezhan clevet enha war he denc'h: *harz al laer!* En em gaout a reas da dremen ebioù d'eun iliz, hag ez eaz enhi. Eno var he zaoulin en eur c'horn tro, en em lakeas da lavaret he *Bater guella* ma c'helle, hag e chomaz eno

ken na velaz eat tenval an iliz gant an noz o tont. Neuze oa red dezhan mont d'he lojeiz. Hoguen gant o colod mont kuit oa deut da zonc'h dezhan euz ar di he d'hañ abouñ sonch a deuas dezhan euz ar peza en doa lavaret dezhan an Aotrou Person: *gwelloc'h eo mervel evit pechi*. Hag e e lakeas don en he galon d'erc'hel mad da guementse.

Eur c'hleuzeur mogneduz a sclerjenne eun draig an ti pa zigouezas Tonic. Ian-Per hag al lamponet all a voa oc'h eva. Ar potrig a reas goustata ma c'helle d'he doul cambr ep beza gwelet. Ac'hano e clevet petra lavare al lonkerien hag ar vourc'hizez.

— Ar potrig kez! Eme ar vourc'hizez. Red eo caout dichans evel kent! Ar varnerien-ze, (me garre e croke ar vosen enho!) Ar varnerien-ze so gwest da zerc'hel ar potrig-ze da vreina en eun ti a binijen! Asa, ma ne ket eur gounnar. Eur potrig hag a voue dija ker brao he vicher! Ne ket da botr-te sur, Ian-Per, eo a vezo gwest da ober couls hag heb. Me am euz aoun ne ve hema morse mad da ober netra!

— Ma vije deut d'an ti da viana, eme Ian-Per en eur laskeur leoudouet, or bije clevet gantha penauz eo digouezet an dra-ze; rag eno edo, a leverer. Mar deo *chipet* he unan ive! Ah! Ne vanc'e ken nemet an dra-ze!

Unan euz ar vevierien a zavaz en he zag hag a reaz en eur eil gosteza d'ar gambric elc'ac'h m'edo Tonic en eur c'horn hag e coezas a dreus corf varnezhan. Ar potrig a ioa ar c'housket deut da c'hounit varnezhan, hag a voue strafuillet oll. Sonjal a reaz oa deut da gregui enha, hag e crie: ne ket me eo.

— Sell, ar glaouennec so aze, eme Ian-Per ha den ne voue! Hag hen da gregui en he vrac'h ha d'he zigaz da greiz an ti. Eno an oll a rea goulennoù ouzhan var eun dro. Pa voa eat eun nebeut he anerez ebioù e lavaras petra en doa gwelet.

— Ar potrig mad! Eme ar vourc'hizez.

Tonic a gredaz oa dezhan e roet ar veuleudi-ze, hoguen dizouezi a reas pa velaz he vourc'hizez o lacat he dorn serret e kichen he fri: petra, emezhi, didalvez ma zout, ne pije ket roet eun taol dorn da zicour da gamarad? Claouestre te ioa o c'hinaoui epad ma *laboure* eguille? Ne pije ket da viana savet he galabousen, hag he digaset gauhez gant ar peza a voa enhi, taltous fall ma zout!

— Morse ne laerin, ha morse ne din da heul-laeron, eme Tonic! Kerkent Ian-Per a roaz eur grabanat dezhan a dreuz he c'hinou.

— Ar peza vezo lavaret dit a ri, emezhan, pe e crevi gant an naoun; clevet a rez! Ha ma levezet guer euz ar peza pezo clevet ama, me droc'ho da deot dit.

Ar potrig kez, scuiz maro, n'en devoue ket zoken eur c'hinaouat vara en noz-ze d'he goan.

Araog ma teuaz ar c'housket da zerra he zaoulagad ruz ha coenvet gant an daelou en doa scuillet, an diaoul a c'hoezaz en he scouarn o lavaret dezhan senti hag ober ar peza a vije lavaret dezhan, evit ma vije assoc'h he zoare. Hoguen ar zonc'h euz ar c'henteliou en doa bet

er gear a voue ar grea, hag en em roas d'ar c'houket en eur lavaret : morse ne laerin !

Pa voa eat ar goan en he dro, Tonig a voue eun nebeut gras gantha. Epad an amzer ien, e stracle bemdez he zent en he benn gant ar riou. Bep mintin e ranke guisca he zillad bet glibiet an derc'hent; ha ne voant ket c'hoas seac'h avoalc'h. He dreid a veze faoutet ha ne alle morse ho zostat oc'h an tan. Evelse an nevez amzer gant he heol hag he glouarien a zigasaz eun tamig buez enha, hag e veze laouenoc'h.

Neuze ez ea d'ar baliou guez so vardro jardin al Luxembourg, hag eno e kemere plijadur o velet c'hoariou ar vugale. Ep dale e voue anavezet gant ar scolaerien, hag ar re-ma a voazas prena he varc'hadourez digantha, hag alies, pa her guelent o chocat he dam creun du ha seac'h, e taolent dezhan dornadou kerez pe frouez all.

Red eo ha m'en defe Doue clevet va feden, a zonje Tonic ! Oh ! Ma carfe va c'has d'ar gear ! Siouas ! N'oa ket echu c'hoas trubuillou ar messaer bihan. G. M.

(Eur pennad all eur wech all).

Hano ar Zant evit ar Sizun-ma.

DILLUN 13 Mae. — Sant Briec, escop.

DIMEURS 14. — Sant Anselm, escop ha doctor euz an Ilis.

DIMERC'HER 15. — Sant Izidor, labourer.

DIZIQU 16. — Sant Ubald, escop.

DIRGUENER 17. — Sant Paschal.

DISSADORN 18. — Sant Venans, merzer.

DISSUL 19. — Pevare sul goude Pasc. Sant Eozen, alvocad ar beorien.

An Abostol hirio :

Euruz an den a so bet cavet didach, ha n'en deus ket redet varlerc'h an aour, na laket he fizians en arc'hant nag en danvez. Pion eo hennez, ma her meulimp ? Rag traou burzuduz en deus great en he vuez. An hini so bet amprouet er poent-se hag a so cavet difazi, he c'hloar n'e devezo fin ebet ; an hini a elle terri al lezen ha n'en deus ket he zorret ; a elle ober an droug ha n'en deus ket great. Evelse he oberou mad a vezo stard e Doue, hag oll Iliz ar Zant a gomzo euz he aluzennou. G. M.

Levr an Ecclesiastic xxxix.

KELEIER.

Ne deo ket etouez ar zoudardet ez ear da glasc tud devot. Pour liessa zoken ho c'hemerer, hi hag an oficerien vras, evel tud ha n'ho deus na feiz na relijion. Guir eo ne ket en ho zouez e ve cavet tud a lavar pedennou hir, hag a heuil al lezen gristen gant ar brassa parfeted. Mes evit santimanchou a feiz ; mes evit eun nebeut carantez ha devotion evit ar Verc'hez, kementse a gaver stanc avoalc'h etouez an dud-se pere a ve lavaret a hent all a rafe fae var an oll deveriou kristen. Setu ama eun exempl a guemense :

Brema eus nao pezeg vloas, pa edo hor soudardet e Crimee o vrezelecet a enep ar Russianet, eun dervezioù benag araog ma kemerjont dre ners ar guer ker brudet a Sebastopol, ar c'hommandant bras, pe ar general a gommande var an oll arme, a bedas da zibri ous he daul an oll oficerien vras. E touez ar re-ma oa eun den iaouanc a rea neuze he guenta bale, a zebre he guenta tam creunn e tinel ar soudardet. E vam a voa eun intron a Paris hag eur gristenez vad. O velet he map eat d'ar vrezel, e c'hoarvezas ganti ar pez a c'hoarve gant cals a vammou, he devoa cals mui a nec'h gantha evit n'hen devoa he unan. O clevet hano eus taol brezel braz-se, da lavaret eo o clevet ez eat da guemeret Sebastopol, e scrivas eul lizer d'he map evit digas sonch dezan ne em conac'haje ket ar vam a drugarez, hag e lakeas el lizer eur vedalen oc'h he bidi d'he douguen. Al lizer a erruas dres en dervez ma leine an oficerien gant ho general. Edont a veac'h azezet ous taol pa erru paot al lizeri hag a ro al lizer-ma d'an oficer iaouanc. Hema a anavezaz dioustu scritur he vam hag e c'hellit, cridi, he galon a lame. Kement a vall en doa da zigueri al lizer, ne allas ket gortoz bete fin ar pred, hag e torraz ar c'hached dioc'htu. Ar vedalen a voa ennaa guezaz var al leuzi, hag a reas eun tamig soun o coeza evel eur pez ar c'hant, an oll a c'houlennas ; petra eo ? an den iaouanc goude beza he destumet, a zavas ar rusder d'he vizach, rag aoun en doa na vije gret goap anezan, a voue red dezan, couscoude lavaret oa eur vedalen digasset dezan gant he vam. D'en na lavaraz guær, mes ar general o kemeret ar goms, a lavaraz : na ruziit ket, den iaouanc, evit receo ar vedalen-se digant ho mam, nag evit he douguen ken nebeut. Ni entrez'homp tud a vrezel, ne leveromp nemeur a bedennou, ne reomp nemeur eus a zeveriou eur c'hristen ; gouscoude eun Ave ne ket hir da lavaret, nag eur vedalen dies da zouguen. Eun tamig sicour digant ar Verc'hez ne rai ket a zroug deoc'h en dervezioù-ma. Evidon-me pehini so bet dija e meur a stourmad tom, am eus ato douguet medalen ar Verc'hez em c'herc'hen, hag e velit ne deus ket great a zroug din. En eur lavaret ar c'homzou-se ar general ha zibrenne he vruchet, hag a ziskueze d'an oll ar vedalen burzudus o luguerni var he galon. En eun taol an oficerien vras all a voa eno a zibrenne ive ho habit, evit diskuez e touguent ive pehini eur vedalen. Antronos, an oficer iaouanc a scribe d'he vam eul lizer ar c'haera ; evit he assuri ne devoa izom da gaout aoun ebet na deufe da goll he zevotion d'ar Verc'hez, n'hen divije mui aoun na mez ebet oc'h en em ziskuez christen, p'eo guir an oficerien vrasa hag ar general en ho fenn a zerviche dezan da skuer.

RIEU HA REDON.

Brema ez eus pell, pell amzer, eun toullad merc'her euz a guær Rieu a voa o voalc'hi dillad er ster. Scornet oa ar ster ; an dour a ioa ien da droc'ha ; an avel a put da zévi. En eur zouba ho dillad en dour, ar m

ched, evitho da gaout riou, a drabelle ; aoun o doa manteze na scornje ive ho zeod mar hen lesjent da eana. Gomz a reant a bep tra, ha caout a reant eur guer da lavaret divar benn pep hini.

Hag an droug prezeg a iea en dro ; hag an teodou a gave peg en liema, en hounnont ; eun difram bennag a gavet da ober e sae pep unan. An drabel a bade abaoue eur pennad mad, hag a iea ato var gresc. Hoguen divar greis ma zea drussoc'h drussa an teodadon, setu eur manac'h o tremen, hag hen en em lacat da guelen ar merc'her :

— Perag, va c'hoarzed, emezhan, kement a zroug prezeguez divar benn tud ha n'o deus great droug ebet deoc'h ? Perag ne gomzit-hu ket euz a vertuzioù ar re all eleac'h comz euz ho fec'hejou pe euz ho fazioù ? Ho labour ne ve ket tennoc'h, hag ho coustians a jomfe digataroc'h.

— Petra glasc ar manac'h-ze ? Eme unan euz ar c'houezierzet en eur deleur varnezhan eur sell treuz. It gant oc'h hent, manac'h brao, ha list ama didrous da labourat ar re ne leveront guer deoc'h.

Ar manac'h a iez ebioù ; he gomzou avad a jomas beguet var galon ar merc'her. Eat eun tamig droug enho, an drabel a iez goaz oc'h goas. Bete neuze n'o doa great nemet droug prezeg ; n'o doa lavaret nemet ar pez a vouient. Hoguen brema en em lekejont da zorna goassa ma ellent traou ha n'oa ket eur guer guir anezho.

Epad ma chilpent evelse paravia an eil d'eben, setu eun doare cos tam paner o vont gant ar ster. Ar mor a voa o tont, hag a bouleze ar baner oc'h creac'h. Unan euz ar merc'her a rellas da droc'ha eur scour keunent, hag a reas gantha eur c'hrog evit sacha ar baner d'ar riz. Ama ec'h eanas trabel ar merc'her. Er baner ez oa eur buguel bihan cousket. Calounou goet gant an droug prezeg ne oufent nemeur beza truezus na carantezus. Eleac'h tenna ar buguel keaz euz ar baner, e poulsjont ar baner adarre da greiz ar ster.

— Ni on eus poan avoalc'h o c'hounit bara deomp hon unan, emezho ; ne ket red deomp mont d'en em garga euz a vugale estren. Kement-ma zoken a roas tro dezho d'en em lacat adarre dioc'h-tu da zroug prezeg.

Gouscoude ar buguel a ioa bet dihonet gantho. Gouela a rea, ar buguel kez. Gouela a rea ha scrijal gant an naoun ha gant ar riou. Ar mor a dene ato, hag her pouleze, hag her pouleze bepret, hag her pouleze bete Redon. Eno ez oa ive merc'her paour o voalc'hi var riz ar ster.

Ar re ma a voa merc'her mad ha devot. En eur labourat e lavarent pedennou pe e canent canaouennou santel. Ho labour a gavent scanvoc'h evelse, hag ar riou a grogue nebeutoc'h enho.

— Guerc'hez Vari, eme unan anezho, o velet o tigouezout an tamig paner cavel-ze, hag oc'h her sacha ganthi, setu ama eur buguelic paour hag a ia, ep mar, da vervel gant ar riou ! Pion en defe ar galon da jom ep he denna ac'halesse ?

— Ia da, eme eun all, varc'hoaz ema Nedelec, hag ober a rafemp poan d'ar Mabic Jesus ma lessemp eur

buguel evel dan er stad truezus-ze. Red e ve beza criz, ha n'or befe ket a jans goudeze.

— Guir a livinit, eme c'hoaz eun all, mes oll omp paour ; oll on eus heac'h o caout bara. Ar binvidicac'haomp n'e deus ket a beadra avoalc'h da zével ar buguel-ze. En em glevomp entrez'homp. Unan her c'hasso ganthi, hag ar re all a roio pehini anezho eun dra bennag bep miz, eun diner mar kirit, evit sicour maga ar c'brouadur. Evelse or bezo oll perz en ober-mad, ha n'on devezo ket izom da labourat cals muioc'h evit sevel eun diner bep miz.

En em glevet a rejont eta, hag oll e rojont ho guer da rei eun diner er miz. Hoguen neuze pebez souez evitho ! Ar buguel a zavaz he unan euz he gavel, hag a lavaraz :

— Merc'her Rieu n'o deus ket roet a ziguermer din ; c'hui oc'h eus va diguermeret mad ; ragse iviziken kar Rieu a ielo disteroch distera bemdez, ha kar Redon a ielo var vella.

Pa en doa lavaret ar c'homzou-ze, ar merc'her p'her gueljont mui, hag ec'h anavezjont ervad oa ar Mabic Jesus he unan eo en doa prijet dont d'ho guellet.

Abaoue an dervez-ze beteg hirio, ar bromessa-ze so eat da vir. Redon a ia ato var gresc, ha Rieu a ia da netra. G. M.

(Tennet euz ar C'honter breton).

Guelloch eguet an dra-se!

PE AN IMPALAER AC AR SERGENT.

Impalaer an Allemagn, Joseph II, ne garie morse nac an traou a apparans, nac an traou skeudus ; eetu ama eun testeni : Eun devez guisket eus eur leviten boutonnet, ac evit compagnon eun domestiq ebken a c'hoas eb e habit a ordrenans, e voa eat en eur voetur (calèche) a daou blas, pehini e cundue elunan, da ober eur bale e tro da Vienne, guær guenta de-meus e rouantelez. Erna edo var zu ar gear ma tigouezas dezan beza paket gant an dour puill.

Digouezet edo c'hoas eun nebeut bale deus kear, ma velas eun den var e droad o tonet ivez d'ar gear vras a Vienne. Ar baleer-ma a reketas eur plas digant ar postillon, pehini ractal a chomas eb finval. Autrou eme ar soudard (rac eur sergent edo) n'eus ket a zies o c'houlen diganeoc'h eur plas en ho kichen ?

— An dra-se ne lakaio ket achanoch tam diessoc'h, pehini gnir neus nemet oc'h o taou er calèche, ac e esperfen ives va uniform pehini a lakan hirio evit ar veac'h kenta ?

Espernom eta oc'h uniform ; va den mad eme an Impalaer, ac e em lakait aze. Eus a beleac'h e teuit ?

— Ah eme ar Sergent donet a ran dimeus ty eur chasseer en peleac'h emeus great eun dijuni mad meurbet.

— Petra e peus eta drebet a vad?
 — Divinit?
 — Me oar me : eur souben great gand eur guellech lard?

— An ia da s' atoue eur souben great gant eur guellec'h lard ; guelloc'h eguet an dra se.

— Eun tam c'hik rostet?
 — Guelloc'h eguet an dra se.
 — Eun tam morzed loe (veau).
 — Guelloc'h eguet an dra-se a lavaran deoc'h.

Oh ! en guirionez, n'hon ket capabl d'en divinout, a a lavaras Joseph II.

— Eur faisán (faisan) aoutrou, eur faisán paket divar plijadur an impalaer, a respontas an den a vrezel, en eur frotta divesker ar postillon..

— Paket divar plijadurezou an Impalaer, ne dlie nemet beza guelloc'h.

— Me en assur deoc'h.

— Eguis ma tasteet deus kear ac evel ma kueze ar glao bepred, Joseph II a c'houlennas digant e gompagnon e pe seurt quartier deus kear edo e c'hober e demeurans ac en peleac'h e ne voa choant da zisquen.

— Aotrou, an dra-se zo re a vadelez, ne garfen ket abusi deus o.....

— Nan, nan, eme Joseph, e pehini ru edo o ty?

Ar Sergent en eur diskulia peleac'h edo o chom a c'houlennas anavezout an hini a rente dezan kement a vadoberou.

— Ah ! da tro ivez, eme Joseph : divinit?

— Den a arme, e zoch ivez, assur?

— Evel ma livirit, Aotrou.

— Letanant?

— Ah ! ia da zur Letanant, guelloc'h eguet an dra se.

— Capiten?

— Guelloc'h eguet an dra se.

— Colonel marteze?

— Guelloc'h eguet an dra se, a lavaran deoch.

— Penaos an diaoul ! eme ar soudard, en eur dastum en eur c'horn demeus ar calèche, daoust a c'hui ve fe marechal?

— Guelloc'h eguet an dra se.

— Asa va Doue ! eme ar Sergent, c'hui eo an Impalaer eta?

— En e hunan eme Joseph II en eur devoutonna e levitez da ziskull e decorationou

— Ne voa ket ledan avoalac'h ar voetur dar soudard da em deleur d'a zaoulin an impalaer, ac e c'houlennas digant ar postillon (evel ma sonje edo) chom en e zao.

— Arabat e eme Joseph, brema treta goude beza drebet va faisán, e fell deoch en em zizober deus ouzon ken buan, me fell din lavaret deoc'h kenavo e kichen dor o ty.

Ha Joseph II en cunduas pete dor e dy en peleach e tiskennas.

O. S.

Ar c'hlenvet speguz a zo var ar chatalou abaoe pell e carteriou so, ar chlenvet-ze so eur c'hontam ker staguz hag a zalc'h keit ma chom zoken oc'h al ler goude beza bet kivizet, avoalc'h eo e ve eur guignaden er biziét pe e leac'h all. Mar touch al lez-ze oc'h eul leac'h kignet, e c'hounezer ar c'hontam. Evelse e comzer euz a guivizerien hag a so bet contamé oc'h ober ho micher, lod all o douguen var ho scoaz ler kivizet pell a voa. Comz a rer dreist oll euz eur c'hreg iaouanc hag e doa touchet oc'h ler evelse. Cas a reaz he bez da douch oc'h he muzel a voa spinac'het neuze. Abenn eun nebeut derveziou goude e voa maro.

Ar c'hazetennoù a lavar adarre ez eus leac'h da gridi e vezo gallet, aben fin ar bloas-ma, beachi var an hent houarn etre Castellin ha Landerne. Al labourou so casset avoalc'h var araog evit esperout kementse. An toul dindan an douar e Neiz vran e kichen ar Faou a zo echu. Pont-Bras Melin-Vern hag hini Pont-ar-Veuzeu a zo gozig echu. Pont-Bras Daoulaz epken so c'hoaz eun tamig mad a labour gantha.

PREIZ AN EID.

KEMPER. — 4 Mai.		PONT-NABAT — 2 Mae.	
Priz ar c'hant lur.		Priz ar c'hant lur.	
Guinis....	15 lur, 59 c.	Guinis....	16 lur, 04 c.
Segal....	9 lur, 84 c.	Segal....	10 lur, 32 c.
Eiz.....	9 lur, 77 c.	Eiz.....	9 lur, 50 c.
Ed-du....	7 lur, 47 c.	Ed-du....	8 lur, 44 c.
Kerc'h....	9 lur, 64 c.	Kerc'h....	9 lur, 50 c.
Avalou-douar	3 lur, « c.	Avalou-douar	4 lur, 50 c.

HENT HOUARN.

Da be heur e tiblas hag e tigouez ar c'hini tan.

O VONT A GASTELLIN VARZU NAONET.

	kenta train	eil train	trede train	1 ^e cl. e paar	2 ^e cl. e paar	3 ^e cl. e paar
Castellin...	6 h. m.	10 h. m.	4 20	» f. »	» f. »	» f. »
Kemper...	7 4	10 55	5 20	3 45	2 60	1 00
Kemperle...	8 34	12 14	6 41	8 50	6 40	4 70
Lorient...	9 12	1 2	7 24	10 75	8 05	5 00
Redon...	» »	4 22	» »	22 85	17 15	12 55
Savenc...	» »	5 28	» »	» »	» »	» »
Naonet...	» »	7 10	» »	31 90	23 95	17 55

O TONT EUS AN NAONET VARZU CASTELLIN.

	kenta train	eil train	trede train
Naonet.....	» »	6 h. 20m.	« «
Savenc.....	» »	7 19	« «
Redon.....	» »	8 29	« «
Lorient.....	7 h. 40m.	12 6	5 48 p.
Kemperle.....	8 23	12 50	6 39
Kemper.....	9 41	2 2	8 3
Castellin.....	10 50	2 59	9 15

Ar Gerant: AR. DE KERANGAL.

Kemper, moulet gand AR. DE KANGAL, Moullier an Escopti

FEIZ HA BREIZ,

KELOU A BEP BRO, HA KENTELIOU VAR BEP TRA,

DIGASSET BEP SUL

Da guement Christen a goms ar brezoune.

Eun Abonnamant d'ar Gazeten a goust :

Evit eur bloas.....	DAOU SCOUET.
Evit c'huac'h miz.....	EUR SCOUET.
Evit tri miz.....	C'HEUC'H REAL.
Eur gazeten ebken.....	DAOU VENNEC.

Ar baamant a dle beza great araog caout ar gazeten.

ALIOU.

Ar scrijou a ve c'hoant da lacat er gazeten a dleer da adressi oll d'an Aotrou MORVAN, Beleg e Kemper.

Ar paeamanchou a dleer da adressi d'an Aotrou SALAUN ebken. An abonnamant a guemerer e ti an Aotrou SALAUN, librer, ru Kereon, e Kemper.

KEMPER, 18 Mae 1867.

EUR RETRED

PREZEGUET, EPAD AR C'HORAZ DIVEZA, D'AR VRETONED A ZO ER HAVR.

Kemper, an 2 a viz mae 1867.

Aotrou Morvan, va mignon ker,

Peñter hoc'h euz ac han-hon da scriva d'e-hoc'h, evit dacat en ho gazeten, *Feiz ha Breiz*, eur guer bennac divar benn ar Retred hon bet galvet da brezeg, er c'horaz-ma diveza, d'ar Vretoned a zo ho chom er gear hanvet *Ar Havr*. Scriva ha ran d'e-hoc'h ar pez hoc'h euz goulennet gant seul vuioe'h a blijadur, ma credan e reio ive ar pez a scrivin calz a blijadur d'ar re a lenn ho gazeten. Rag ar Vretoned, hindi, ne d'int ket, dre c'hraz Doue, henvel euz tud calz broiou-al pere a zo dre hoant da glevet kealou euz tud ho bro. Ar Breton, hindi, pa gleo coms euz he guebvroiz, he galon en em lacat da dridal. Barn a ran ama ar Vretoned var-n-hon vaunan.

Araoc coms d'e-hoc'h divar benn ar Retred am beuz prezeguet, va lezit da lavarout d'e-hoc'h eur guer bennac var ar gear hanvet *Havr* ha stad ar Vretoned er gear-ze.

Ar Havr a zo eur gear savet var bord an aod, en Normandi, el leac'h m'en em dol er mor ar ster vraz hanvet *Sein*. Ar ster-ze eo a dremen dre *Bariz*. Ar Havr a zo eur gear a gonverz braz. Evit diguemeret al listri a zeu enhi, euz a bep corp ar bed, ez euz bet cleuzet ar pez a hanver bassinou-mor, ledan ha doun. Setu ama hanoioù ar bassinou-ze : bassin ar *Roue*, hini ar *C'honverz*, hini ar *Varren*, hini *Vauban*, hini ar *Florid* hag hini an *Eur*. Hon-ma diveza eo ar vrassa. Unan-al zo c'hoaz, hini an *Doc*. An *Doc* a zo eur vagazin veur savet evit dastum ar vare'hadourez, hag e creiz ar vagazin-ze

ez euz cleuzet eur vassin e pehini al listri carguet ha hell dont tre da ziscarga ho marc'hadourez.

Ar gear en em asten tro-var-dro d'ar bassinou morze e pere e teu tre an holl listri dre sklujou a vez digoret evit ho diguemeret.

Brema ez euz eur pemp bloaz var-n-ugent hennag ar C'havr a oa eur gear viban clozet gant moguerioù. A veac'h he d'oa neuze ugent mil den. Pell zo dijamet bet discaret he moguerioù evit he c'hreski, hag hiriio ar gear en em asten eun anter leo, peuz-vad tro-var-dro, hag e conter enhi var dro dec mil a pevar ugent a dud. Al labourou a zo bet ret da ober evit discar ar moguerioù, creski kear hag ober en hi ar ruiou-nevez, an tiez caer hag ar valiou, dudiu a veler hino, a zidennas er vro-ze eur maread bretoned.

Ar c'honverz braz a savas er gear-ze gand an holl rouanteleziou euz ar bed, a zidennas eur maread-al ; Roscoiz a zo deuet ive da zigaz d'ar gear-ze goumidou prim ho douar, ho oignon, ho c'hinnien, ho artiehaod, ho c'holl flear. Da guenta a re-ma ne rent nemed mont ha dont. Divezatoc'h darn an-ez-ho a zo chomet er Havr da verza, ha darn-al a deu da zigaz d'ez-ho marc'hadourez. Hiriio ne ket hepken marc'hadourien lugumach a Roscof a gaver er Havr, caout a rer betec marc'hadourien viou. Cavet hon euz unan hag en d'oa daou gomis en he zervich. Ar re-ma a ioa a gostez ar Menez.

Ar Vretoned a gaver er Havr a zo cozié-holl divar bord an aod en em asten a zalc' Brest betec Landreguer ha Pempol. Covesseat hon euz tud a Lambézellec, a Lesneven, a Roscof, a Castel-Paol, a Vontroulez, a Lanneur, a Blouignau, a Blougaznou, a Blufur, a Lannion, a Berroz-Kerrec, a Landreguer, a Langoad, a Bempol, a Enez-Vriad, a Pontreo, a Voengam, Benaich, Plonevez-Moedec, Logivi, hag euz a galz parresioù tro-var-dro. An darn vrassa zoken a zo a Escopti Treguer ; muioc'h a Dregueriz egued a Leoniz.

N'euz coulz lavaret nemet Roscoiz ha paotred ar Me-
nez hoc'h ober converz er Havr, ar re-al a zo ho carga
hag ho tiscarga al listri var ar c'haeiou, ho chaeha var
al listri evid ober d'ez-ho dont tre er bassinou. Eun
niver braz a labour hirio var ar vassin nevez a glenzer
el leac'h m'edo, brema tri bloaz, ar pez a hanved ar
Citadel. Eno he cargont ar c'hirri a zouar, he charreont
pe he treinont cariguellou. Darn-al a skub ar ruiou, a
zastum an teil, darn-al a zo var ar bagou tann a ia hag a
zeu euz ar *Havr* da *Baris*, euz ar *Havr* da *Honfleur*,
da *Drouil*, da *Gan* en Normandi, euz ar *Havr* da *Lon-
drez* ha da *Hambourg*. Setu ar pez a ra ar voazed.

Ar merc'hed, darn a aoz boued d'ho goazed hag a
zoursi euz ho fugalez; darn-al a ia var devez da ganna,
da c'hriat, da ober camprou, ar merc'hed iaouanc a
zervich e tiez pinvidic, pe e stalliou, pe er c'haffeu hag
en hostalirio. Calz euz ar groagez a zalc'h pansion
evid ar Vretoned. Beza ez euz zoken hag a zalc'h caffeu
var eun ton huel avoalc'h. Setu aze penaoz en em gav
ar Vretoned er Havr.

Ne ket red d'omp brema lavaret hon euz cavet ne-
beud a vondianed etouez ar Vretoned, hen divinout a
ror eaz. Pae mad ho deuz bemdez, guir eo. Ar re a gav
labour (siouaz! calz ne gavont ket), a c'hounit bemdez,
(pa labouront), eur scoed, c'houezec real, beteg ugent
real, (nebeud a ia beteg ugent real). Mez petra eo
c'houezec nag ugent real er Havr evit maga daou, tri,
pevar pe bemp den? En hor bro c'houec'h pe eiz real
a dal calz muioc'h. Er *Havr* eo kerroc'h beva egued e
Paris zoken. Ar Vretoned er *Havr* ne reont, coulz
lavaret, nemet frita mizer. Den ne oar kement-se guel
egued hon-me. Va c'hredint eta, ar re a helfe beza tempt-
tet da guiaat ho bro evit mont da glask chanz d'ar
guez-ze, chomint en ho bro. Nag a hini a zo er Havr
hag a garfe beza e Breiz-Izel! Siouaz! N'hellont ket
distrei, rac n'ho deuz ket a beadra da baea ar vag.

Ma, m'ar d'eo braz mizer ar c'horf, mizer an ene a zo
c'hoaz brassoc'h.

Er Havr n'euz beleg ebet, nan n'euz ked unan, hag
a oueffe ar brezonec. Rac-se morse guer ebet, er gador
a virionez, e brezonec, nemed pa arru me pe eur belec
Breton bennag-al en ho zouez, da lalaret eo a bep daou
pe dri bloaz. Ar c'hristen coulzcoude ne vev ket hep ken
a vara, he ene paour a renk caout ive he magadurez,
da lavaret eo, comzou Doue. Var ar poent-se ar Vreton-
ned guez a zo henvel tre, er *Havr*, euz an dud gouez a
vev e coajou an Americ. morse ne glevont prezeg com-
zou Doue. Beza ez euz calz hag ha oar ar gallec. Ma ne
oueffent ked ive, ne ked eur belec bepken a renkfant
da gaout, eun anter doussen ne ve ket re. Sonjal a rer
ez euz var bordic pevar pe bemp mil a Vretoned er
Havr; a dra zur ez euz en ho zouez eur c'houec'h pe
zeiz cant ha ne ouzont tam gallec, pe ne ouzont ked
avoalc'h a c'hallec evit tremen hep eur belec Breton.
Labourat a rencont ken abred ha ken divezat ma ho
deuz a vech amzer da lavaret eur bedennic ver euz

mintin hag euz noz. Ar vistri a implij anez-ho a zo ken
difeiz, ken dallet gand an arc'hant, ma reont d'ez-ho
labourat d'ar zol da vihana teir, peder heur araoc creste
dindan boan da goll ho bara. Penaoz mont d'an oferen!
hag ar c'hamaraded fal, (re vraz, siouaz! an niver anez-
ho), penaoz en em denna out-ho? Var digarez eva eur
banne, en em lezer da vont d'an hostaliri, hag eno an
demptation a zo braz. Ar banne kenta a denn eun eil
banne, hag, a loum, aloum e teuer da douma hag avichou
da goll ar penn. An hini en em gav en eun henvelep
stad hep belec na convessour a zo truezuz stad he ene.
Va c'hredit eta, c'hui Bretoned am lenno, mar d'hoc'h
temptet da guiaat ho pro evit mont d'ar *Havr*, var di-
garez gounit muioc'h, chomit e Breiz-Izel, gant nebeu-
toc'h, calz evurusoc'h hoc'h ama. Ama eo essoc'h
beva, ama eo calz essoc'h ober silvidiguez an ene. Eur
mignon hen lavar d'e-hoc'h, hag eur mignon guiziec,
diinterest hag ho car eguiz eur breur.

An holl Vretoned a zo er *Havr* a zo eta collet? N'hen
lavaromp ket, Doue ra viro. Er *Havr* ez euz christe-
nen vad etouez ar Vretoned, ha christenien seul vouel-
loc'h m'az' eo diessoc'h d'ez-ho beza mad. Ia beza ez
euz tadou ha mamou, bugalez, artizaned, servicheurien
ha labourerien leun a feiz hag a relijion. M'ar ho pije
heuliet ar retred em ez prezeguet d'ez-ho ho pije hen
gulet coulz a me.

An aotrou Cardinal *Bonnechose*, Arc'hescop Rouan
en deuz va galvet, ha d'ar bevare sul euz ar C'horaz em
euz commanset da 7 heur euz an noz, e iliz Sant Fransez,
parrez en dro da behini ema ar bassinou-mor. Diou
vech-al e oan bet araoc ho prezeg ar Vretoned er Havr.
Er vech-ma ez int dent dam c'hleyet, a da govez calz
muioc'h egued en diou vech guenta. Prezeg em euz great
anez-ho d'ar zul, d'al lun, d'ar meurs ha d'ar iaou. En
devezion al evije prezeguet e gallec evid ar barressioniz.
covez am euz great hep mintin ha bep noz divezat beza
am euz hed ar gosolasion da velet eun niver braz a Vre-
toned ho tostaat gand eur guir feiz, gand eur galon
mantred, euz tribunal ar binijen, ha gand eur guir devo-
sion euz an daol Fask. Ra blijo gant Doue ho c'hendel-
cher en hent mad hag er volontez vad ho doa pa em euz
ho c'huiteat d'al lun Fask.

Setu aze, va mignon ker. Aotrou Morvan, stad hor
c'henvroiz er *Havr*. Ar virionez am euz lavaret hed-da-
hed. Dleout a ren hel lavaret, evit distrei tud hor bro
da vont d'en em deuleur en eur vizer c'hoaz brassoc'h
egued hini Breiz-izel. Ar baeamand a eur scoed, c'houe-
zec real, ugent real a helfe tenti meur a hini, c'hoaz eur
vech, eur scoed er *C'havr* a dall a vec'h pemp real,
aman.

Ho mignon a galon

ALEXANDRE, CHALOUNI.

EUN GUER

VAR AR PEZ A HANVER AN

EXPOZISION.

Va Mignon ker,

En eur zistrei euz ar Retred am euz prezeguet d'ar
Vretoned a zo er *Havr*, em euz gulet e Paris ar pez
azovanavezet hirio dre ar bed holl, dindan an hano a
Expozision. En Escopti Kemper ez euz e'houec'h cant
ha triugent mil a dud. Pemp cant anez-ho, martreze,
a jelo da velet an Expozision burzuduz-se, ar re-al a
ghomo er gear ha n'her guelint ket. Evit ober plijadur
d'ar reze, ez comp da essaat rei d'ez-ho eur skenden
euz ar pez, hon euz gulet gand hon daoulagad. Bezit
eta, ar vadelez da lacaat hon lizer e *Feiz ha Breiz* ho
cazeten.

E costez ar C'huz-Heol e Paris ez euz eun ti braz
hanvet scol ar soudarded. Dirag ar scol-ze e oa eul leur
vraz plean ha compez, var behini an Impalaer a dremene
he revuiou var anneau a ugent, daou-ugent ha tri-
ugent mil den. Al leur-ze a renk eta beza braz dreist.
N'ho euz ket he muzulet. Tud guiziec ho deuz lavaret
d'omp penaoz pep costez euz al leur gare-ze en d'oa
eun c'hant leor a hirder. Muzulit brema hoc'h unan en
ho speredo. Ma, al leur-ze a zo pen dre hen dindan ti
ha liors an *Expozision*.

Al leur vraz-se compez ha plean guez-al a zo bet dis-
pennet ha labourer en henvelep fesoun, ma'z euz enni
torguennou ha caoniennou. Ne oa ked an distera bro-
shen var nizi araog, hirio e veleur pland a bep seurt, a
bep bro, betek guez euz ar re deoa, ha ker glaz ha ma
vent bet diouanet eno. Al leur-ze a oa sec skorn, ne
rede var an distera berad douar, hirio e veleur enni
soursennou douar hag a zail en ear dec ha ugent troa-
dad, neier diouanet pere e red an douar evel e Sant
Herbot, ha beteg eur ster leun a besked. Euz a beleac'h
ha penaoz eo bet digasset an douar-ze? Goulennit hen di-
gand eur re bennag-al evidomp-ni n'hen ouzomp ket.
El liorz-se e veler savet tiez a bep guiz, hag e guiz bep
bro. Eur chapel zoken euz ar vrava a veler. Gulet a
renv eul liorz-se tiez guez, ar pez a hanver *Serriou*, ker
braz hag iliozou canton er vro-ma. An tiez guer-ze a zo
carguet a fleur hag a bland euz ar broiou-al, pere n'hel-
lont beva nemed en doumer vrassa. Evit rei d'ezho an
doumer-ze, ez euz great ferniel en douar hag ato tann
var alun enho. Gulet a rer c'hoaz el liorz-se pland
frouez a bet seurt hag a bep bro ive, hag e pannerou,
frouez euz ar re gaera hag euz ar re vella meur daou ha
tri miz araog an amzer. Beza ez euz ive lodennou douar
a eub anter devez arad, hadet a bep seurt greun, id,
jeou, ha lugumac h evit an dud hag ovid al louened. —
Hag an traou-ze holl dispartiet dre aleou ledan ha fichet
er mod an dudiussa. Souezet maro omp chomet dirag
ar burzudou-ze d'ar merc'her gonde ar zul Fask diveza,
rac pa omp bet e velet al liorz-se da veurs al lard, ne
oa c'hoaz, coulz lavaret, netra el liorz, an douar hep-
ken a oa labourer, ha pa hon euz gulet d'ar merc'her

Fask kemend a blant hag a vuez ha guez ker teo ha
ken huel, ispicial ken glas, hor zouez n'eo ket bet bi-
ham...

Gonde beza bizitet al liorz hon euz, ive, bizitet an Pa-
lez golet...

Ar palez-senedketron de vel eur rod, henvel eo euz
c'hele'h pa ve goasket var he zaou gostez, oval eo evel
ma lavar ar c'halloued. Ne ma ket treereireiz al liorz,
muioc'h en em gav e tu ar C'huz-Heol egued, e tu ar
Zao-Heol, ha kemend e costez an Anter-Noz hag e cost-
tez ar C'hreste. E ereiz ar palez, evel tro var dro, ez euz
eul liorz. Pemp ale dro golet a gonten. An hini a ro var
al liorz a ziveaz eo a galz, ar vrassa. An teir al a ia
var vihanaat betek creiz, evel se an hini a ro var al liorz
greiz eo ar vihanna. Ouspen an aleou tro, ez euz ive ar
leou-al, peder var n'ugent bennag, hag a dreus an Pa-
lez a bep costez, eguiz empennou eur rod. Radit an
aleou-ze e guiz ma kerfet, ne velfet nemed traou burzu-
dus. Evit lacaat dioc'h tu en ho spered eur skenden euz
a vraster an Expozision, e leverimp d'e-hoc'h e renk-
ker ober var bordic pemzeg ha tri-ugent cart-leo (pe
guilometr) evit mont dre aleou al liorz hag ar Palez, da
lavaret eo, trivac'h pe naontec leo. Ma ne deo ket guir
kement-se, omp bet tromplet gand ar re a ra ar seridou
public ha gant tud guiziec ha n'ho d'oa interest ebet
d'ho trompl. Lavaret d'e-hoc'h brema kemend a zo
er palez-se a ve re hir. Evid anaout an holl draou-ze e
ve red lenn an daou leor a verez, eun pere euz an mor-
ket piz. Peplini euz an daou leor-ze a zo pen-teo hag euz
breviel-lare. N'ho h'ket evit sonjal en eun dra bennag a
na vez ked en ho. Hag ho peffe cant bannet leun a bec-
hou ugent real, n'ho peffe ket a beadra avoalc'h eur
prena kemend a zo e stalliou Palez an *Expozision*. An
Expozision digoret an deiz kenta a viz ebrel, ne vev
serred nemed d'an deiz diveza a viz here. A Breiz-Izel
e veler calz traou, betek zoken guiscamanchou guiz
Leon ha guiz kerne. Paotred ha merc'her e goar, henvel
euz tud beo, a veler guisket e guiz Plovescat, hag e guiz
Kerfeunteun ha Floare. An Barizianed a zigor daoula-
gad vraz dirag ar chupennou hag ar vrossiou ze ricam-
net hag alaouret; beac'h ho deuz o credi e vez e guir-
nez ker coant ha ker caer guiscamand ar Vretoned. Ne
vent ket souezet hag e teulle ar Barizianed hag ar Bariz-
zianezed da guemeret ar mod-se ahen, ne bend amzer
rag n'euz nemed Doue hag a ouffe gont peguind jez, da
brellentez ar Barizianed e neventiziou ar mod. Dija zo
ken e veler meur a vondian o vragal dre ruiou Paris, gand
chupennou Leon ha Kerne.

HISTOR ZANTEL

(TRIZKVED PENNAD)

Ann oan paskal. — Ann dekved goude maro ar re
ghenta-ganel etouez ann *Ejipsianed*.

EXOD. X. XI.

Ann Aotrou-Doue a lavaraz da Volzes Pharaon na

zelaouo ket ac'hanoc'h, evit ma c'hoarvezo c'hoaz eleiz a vuzudou e douar ann Ejipt.

Brema, setu petra hoc'h euz da lavarout d'ar bobl : Ra c'houlenno pep den digant he vignoun, ha pep maouez digant he amezeghez, listri aour ha re arc'hant, ha dillad eleiz. Ann Aotrou arai ma kavoc'h he bobl trugarez dirag ann Ejiptianed, ha roet e vezo d'ezho, evel e prest, ar pez a c'houlennint.

Ann Aotrou-Doue a lavaraz da Voizes ha da Aaron e douar ann Ejipt : Ar miz-ma a vezo evid hoc'h ar c'henta euz ar misiou, ar c'henta e vezo euz a visiou ar bloaz. (Hor miz meurs-ni a oa ar miz-se.) Komzit ouc'h holl bobl bugale Israel, ha livret d'ezho. D'ann dekved devez euz ar miz-ma, ra ghemero pep penn-tieghez eun oan dre bep tiad-tud ha dre bep ti. Ma n'euz ket enn he di tud a-walc'h evit ghellout dibri ann oan, ra ghemero euz ti he amezek tosta a-walc'h a dud evit ghellout dibri ann oan.

Ann oan-ze a vezo hep zi, eur par, eun oan bloaz. Ha mar kirit e kemerot eur menn-gaor, gant ma e vezo evel eghile, dinam, par, ha bloasiad. Hag e virot ann oan-ze beteg ar bevarzek devez euz ar miz-ma ; hag holl bobl bugale Israel hen lazo en enor da Zoue, enn deiz-se var ar pardaez.

Hag e kemerint euz he c'hoad, hag e likiint euz ar goad-se var zaou bost ann or ha var c'hourinou ann tiez e pere e tebrint anezhan. Hag enn noz-se e tebrint he he ghik poazet ouc'h ann tan, ha bara hep goell, gant lezeghez c'houero. N'e zebrot anezhan netra kri, na poazet enn dour ; mes poazet ouc'h ann tan ; he zibri a reot penn treid ha bouzellou. Ha na choumo netra anezhan a-benn ar mintin. Mar choumo enn dra bennag enn ho tilerc'h, hen devi a reot enn tan.

Hoghen, er c'hiz-ma e tebröt anezhan : Starda a reot ho tillad gant eur gouriz en dro d'ho tiougroazel, evel tud dare da vont e beach ; boutou ho pezo enn ho treid, hag eur vaz enn ho tourn. Hag e tebröt gant hast, rak ar pask eo, da lavarout eo tremen ann Aotrou.

Hag enn noz-se e tremeninn dre zouar ann Ejipt, hag e skoinn pep kenta-ganet e douar ann Ejipt, adaleg ann den beteg al loen ; hag e sevenin ar varn am euz doughet var holl zoueou ann Ejipt, me ann Aotrou. Hag goad ann oan a vezo ho sin var an tiez e viot enn-ho ; Hag e velinn ar goad-se, hag e tremeninn ebrou d'ehoc'h, ha goalen ar maro na doucho ket ouz-hoc'h.

Bugale Israel o vont ac'hano, a reaz evel m'en doa gourc'hemenet ann Aotrou.

Hag e c'hoarvezaz da hanter-noz ma skoaz ann Aotrou-Doue ann holl vipien kenta-ganet e douar ann Ejipt, adaleg kenta-ganet Pharaon pehini a rene var eun dro gant-han var tron, bete kenta-ganet ar sklavez enn he frizoun. Ar re ghenta-ganet euz al loened a varvaz evel ann dud.

Ha Pharaon a zavaz e kreiz ann noz, hag he holl zervicherien, hag ann holl Ejiptianed. Hag e savaz eur

c'hri forz dre ann oll Ejipt, rak ne oa ti ebed a ghemet ne vije eur maro enn-han.

Ha Pharaon o veza galvet Moizes hag Aaron, a lavaraz d'ezho : Savit, hag en em dennit kuit diouc'h va bobl, c'houi, ha bugale Israel ; sit, ha grit eur zakrifis d'ann Aotrou, evel ma divirit, kassit gan-ehoc'h ho tenved hag ho chatal, hag en eur vont kuit bennighit ac'hanoun. Hag ann Ejiptianed a starde var bobl Doue evit ma'z aje kuit buhan buhan, so lavarout : Mervel a raimp holl.

(Dilivranz ar Bobl a Israel euz a gaptivite ann Ejipt a zo eur skeuden gaer euz a zilivranz hon eneou euz a gaptivite ann droug-speret. Pharaon hag he dud a zalc'he pell a oa bugale Israel enn eur stad ponniuz, ha na felle morse d'ezho ho lezel da zistrei d'ho bro ; ann Droug-Speret hag ann techou fall, he zervicherien, a zalc'he ann holl dud, koulz lavarout, enn eur stad tristoc'h c'hoaz abaoe ar pec'hel orijinal, ha n'ho lezent morse da vont d'ho guir vro, pehini eo ar baradoz. Doue a lavar da Pharaon : Me lazo ar re ghenta-ganet euz ho rouantelez, ha neuze e lezfot va bobl da vont el leac'h ma fell d'in ez afe. Jezuz-krist a lavar d'ann droug-speret : Me ho taolo er meaz ; me zismantro goudeze mistri ar bed, pere, evit plijout d'ehoc'h, a vir ne vez prezeghet va aviel d'ar boblou ; me zismantro techou fall ann dud, dre va gras ; dre va c'helennadurez, dre va zakramanchou ; ha neuze, evel n'ho pezo mui guir ebed var va zud, ho lezfot da vont da rouantelez va Zad.)

PEVARZEKVED PENNAD.

Teac'h ann Israelited diouc'h ann Ejipt. Ar pask ho devezo da ober bep bloaz, da zerc'hel sonj euz ho dilivranz.

Euz ar bed 2513. — Araog Jezuz-Krist 1491.

Bugale Israel a reaz ar pez en devoa Moizes gourc'hemenet d'ezho, goulenn a rejont digant ann Ejiptianed listri aour ha re arc'hant ha dillad eleiz. Hag ann Aotrou-Doue a reaz ma kavaz ar bobl trugarez dirag ann Ejiptianed, evit ma rojent d'ezhan e prest ar pez a c'houlenne. Hag er c'hiz-se e tibourc'hjont ann Ejiptianed. (Ne ket eul laeroni a reant ; Mestr ann env hag ann douar ho roe d'ezho ; hag ar traou-ze ne oant nemet eun die'haou euz al labourou tenn ho devoa great epad keid amzer evel sklaved, da lavarout eo, hep beza bet paëet, evel ma oa dleet, diouc'h ho soaniou).

Kement a hast a oa d'ho guelet o vont kuit, ne oe ket roet amzer d'ezho da bourchas ken boed nemet ar pez a oa enn ho ziez. Ar bobl a ghemeraz eta toaz meret ha na oa ket gdet c'hoaz, hag o veza he skoulmet enn ho mintili, hel lekejont var ho diskoaz.

Moizes a gazaz ivez gant-han eskern Jozeph ; dre ma en devoa Jozeph great da vugale Israel touet var ho le e rajent kement-se. Lavarët en devoa dezho : Doue a zeui d'ho kuellout, kasit va eskern gan-eoc'h euz ar vro-ma.

Pevar c'hant tregont vloaz a ioa ma edo bugale Israel enn Ejipt. Dilëac'hia a rejont diouc'h Ramesses var dro c'houec'h kant mil-den gouesti da zoughen ann armou,

hep konta ar merc'hed nag ar vugale. Oc'h penn-ze, eur bobl munud hep niver az eaz kuit var eun dro gant-ho ; ha denved ha chatal, ha loened a bep seurt, eun taol braz anezho.

Doue na fellaz ket d'ezhan ho c'has d'ann Douar Santel dre vro ar Philistined pehini a oa ann hent tosta, gant aoun, pa vije deuet ar boblou-ze da stourm out-ho, na vije deuet keuz d'ezho, hag ho divije klasket distrei adarre d'ann Ejipt. Mes ho c'has a reaz, en eur ober tro, dre hent ar gouelec'h pehini a zo ec'harz ar Mor ruz.

Enn unan bennag euz ho ehanou, Moizes a zisplegaz d'ezho gourc'hemen Doue divar benn lidou ar pask.

Pobl Israel, emez-han, chetu c'honi diboaniet hag eat er meaz euz ann Ejipt e miz ann edou nevez ; ho pet sonj euz ann deiz-se. Ha pa en devezo ann Aotrou ho lekeat e douar ar Gananed, evel m'en deuz touet d'ho tadou ha d'ehoc'h e raje, c'houi rei bep bloaz, e doug ar miz-ma, lidou ann Oan paskal. Epad seiz devez, adaleg ar bevarzek euz ar miz beteg ann c'henta-var-ughent, e tebröt bara die'hoell ; hag ar seizved devez a vezo gouel braz ann Aotrou. Ann Oan paskal a zebrot en doare ma hoc'h euz he zebret enn noz kenta ho tili-vranz. Ha pa c'houlenno digan-ehoc'h ho pugale petra eo al lid-religion-ze ? C'houi a lavaro d'ezho : Sakrifis tremen ann Aotrou eo ; pa dremenaz ebrou da diez bugale Israel enn Ejipt, o skei ann Ejiptianed, hag oc'h espern hon tiez-ni. Oc'h penn-ze, dispartia a reot d'ann Aotrou ho Toue pep kenta-ganet enn ho ti, ken etouez ann dud, ken etouez al loened ; ann holl bared ho pezo enn doare-ze a vezo tra-sakr ann Aotrou. Hag enn amzer da zont, pa c'houlenno ho map diganeoc'h : petra eo kement-se ? E respontot d'ezhan : Pharaon o veza en em galvet, ha na felle ket d'ezhan hol lezel da vont kuit ann Aotrou a lazaz pep kenta-ganet e douar ann Ejipt adaleg kenta-ganet ann den bete kenta-ganet al loened. Dre a beg da guement-ze e lazann en enor d'ann Aotrou kement pa a zigor ar vamm, hag e tasprenann c'hui har pe ghenta euz va bugale. Al lidou-ze a vezo da gant euz d'ehoc'h eur zinipe eun arouez, da zigas sonj ebrou ann Aotrou ho tennet euz ann Ejipt hag ann douar nerzuz. Ann Oan paskal a Juzevien a oa eur skeuden gaer euz hor Zalver Jezuz-Krist, Oan Doue, Oan dinam, hep zi, ho lekeat d'ar maro e kreiz he vrud. Noz kent hon Res-sedemtion pe ho tasprenadurez, ar bevarzek devez euz ann Oan paskal, ho arad miz meurs, Jezuz a instituz Sa-od kramant ann Aotrou, hag a reaz ar pask nevez gant he Ebestel enn eur d'ezho, dre ar Communion, he am ghik hag he c'hoad da zibri ha da eva. Hag antronoz, o e o ver var var ar goaz, e tili-vraz ac'hanomp diouc'h sklavezvezoz ann droug-speret. Ann holl a renkaz dibri euz ann Oan paskal evit beza dilivret, ha Jezuz a lavar enn he Avel : *Ma na zebrit ket kil Map ann den, ma na evit ket he c'hoad, n'ho pezo ket ar vuez enn-hoc'h.* Ann doueou, ken a gonf, ken ha spered, merket gant

Moizes evit dibri ann Oan paskal, a ziskouez e pe stad e tleomp beza evit tostaat ouz ar Communion.

(Eur pennad all eur wech all).
AR VESVENTL.
(Eil pennad).

Guechall goz hor tadou
Tud a benn a spered
Ker fur en ho c'hoazou
A garie lavaret
Bez euz tri zebret ar bed
Dionall outho a zo med
Da drei fall hi zo boaz
Heol a zispak re vintin
Merc'h a brezeg e latin
Greg a ev evel goaz

Bezit eun den desket,
Gouezit Saoz ha gallek ;
Bezit eun den dournet,
Dibar gant peb benvek ;
Bezit Aotrou, Markizez,
Mar d'oc'h mesier, mesierez,
Kenavo d'oc'h-henor...
Ho kened, ho kouisiegez
A gouez ho zalloudegez...
Ouzoc'h prest ne zellor.

III.

Abet c'hoaz an ever
En em laz, hag hep truez,
A goll kent an amzer
Ho iec'hed hag ho buer
Penaoz herzel d'ezho
Hirio leun, hour da geyi
Vare hoaz, ha vare hoaz all
Nemed al loa da lipad
Eun tam askorha da gignad
Beva moan, beva fall

Dhouec'hed, kamard
A lavar eul lonker
En he zorn guennad
O trinka gant komper
Hogen guelloc'h e komfer
Evelhen ma lavarfe
D'oc'h ankou, d'ho maro
Rak dre ma ra korfadou,
E kemer eur vol mouzou
Abred hep diskaro

Da bieu eo ann ponniou
Arc'hleaved, an darsien
Da biou ar voal reosion
Evel d'ar vesvierien
Lod a vez ho fenn flusket
Ha lod all ho ehorfountret
Gant mil lam, mil stocad...
Eun darn kouezet e poullou,
Darn abradet e toullouez
A xig gant ho c'hoad

Da vir e teu peb dez
Komz ar Spered-Santel,
E rank tud, hag a leiz,
Ha coeza ha mervel,
Kent ar poent ep ken abeg
Nemet ho beva lonteg...
Ha pa ve oll a zir
Korfou a vez ker sammet,
Korfou a vez ker kaset,
N'ouffent ket padout hir.

IV.

Koll honor ha brud mad
A zo c'hoaz tra dister ;
Beobepred e nep stad
Ken nebeut ne chommer ;
Ar c'holl braz ha diremed
Eo, hep mar, koll eurusdet
Ha gloar ar barados...
Hag hennez eo ar c'holl kriz,
Mesier pennok, mesier briz,
A zo oc'h da c'hortoz.

Den a zeu da vervel,
He ene kaillaret
Gant ar pec'het marvel,
A zo eun den kollet...
Hogen eur pec'het marvel,
A denn da boan eternal,
Eo eva da vesvi...
Mesier eta mar marver,
Dre-ze hep ken e kouezer
En ifern, ha zevi.

Mez piou eo an ever
Dougned d'ar c'hofajou,
Da heul na oar ober
Eur c'hroz a bec'hejou ?
Mesvier d'he c'her kalz ne zalc'h...
Mesier a vez a deod balc'h...
Evit caout eur banne
N'euz voal guzul na roio.
N'euz voal affer na raio,
E versfe he ene !

Gant Doue, gant kovez,
Gant pidi n'eo chalet ;
Da nousped ar zulvez
Hep oferra vez gaelet ;
Tatinad ar misteriou,
Debri kig d'an oll deisiou
Eo giz an den divarn...
Pa dlefe mond d'an ilis,
Her c'hlever gant an hostiz
O trouzal en davarn.

Diouallit, me ho ped,
Oc'h daouarn eur rouller ;
Mesier a zeu d'ar red
Paotr lipouz, flouter...
Bourc'hiz, noter, marc'hadour,
Tiek, mevel, devezour...
E krog a zeou a gleiz...
Den demezet, kulator,
E kign greg, e sun minor...
Tad, ne dalv ket ar bleiz !

Mar d'eo pec'hed d'an oll
Aloubi tra eun all,
Pebez torfed eo koll
Breur, pe c'hoar dre skouer fall !
Oh ! a bet a vez kollet
Gant eur mesier dirollet !
E skol eur seurt kanfard
Ha tud vraz, ha bugale,
An oll a oar hep dale,
Pec'hi koulz ha soudard !

N'euz voal dech, n'euz si fall,
Daoust d'ar vro ma vever,
Oll ep eur mesier dall
Peurvuia n'ho c'haver...
Penn kaled, spered kintuz,
Komzer rok, lanchen flemmuz,
Eo loudour evel ki...
Plac'h e deuz guir volontez
D'en em vired dilastez,
N'hell ket chom en he di.

V.

Ma teufe c'hoaz furnez
D'ar mesier gant an oad...
Ma taolle c'hoaz evez
Dre ma sempl a he c'hoad !
Hogen, siouaz ! o kosaad
Ken ne ra nemet voasaad !
Evel eun den tropik,
Gant arzec'hed hen dare,
Sul ma c'hev a vir doare
Brasoc'h vez he itik.

Oh ! ne ket na hellit,
Mesier, beva guelloc'h ;
Evit-se ne rankit
Nemet poania frankoc'h...
Skuitz oc'h-hu gant ho klenved ?
Klevit ganen eur remed,
Dibar e peb mare :
Kent ma varvot bezit den,
Evit dour sclear, netra ken...
Grit, grit, hag oc'h pare.

Evit guir ar remed
A rai doan d'ho kalon ;
Nec'h a ro d'ar spered
Dilezel eur mignon...
Mez red eo gounid, pe goll...
Hounez eo affer an oll...
Sentit, pe na rit van ;
Er bed-ma dioc'h ma vevot,
Er bed-all prest e kavot
Pe ar c'hloar, pe an tan.

Hast eta, sao, rouller,
Dalc'h berr var da dech fall...
Deuz var da giz, lonker,
Ha bez eur c'hristen all...
En em erbed oc'h Jezuz,
Oc'h he Vam madelezuz,
Ma vezi sikouret ;
Tec'h, chom pell dioc'h an danger,
Ha divar nebeut amzer
Ez oud eun den salvet.

O va Doue, poent eo,
Ne vezin mui rouller...
Penaos on-me c'hoaz beo,
A geit zo me lonker ?
Jezuz, Mari, va skorit,
Ha yar va zreid va stardit...
Va c'hont a ve devi...
Mez me rai peb pinijen
Dre domder, dre ienijen...
Me varvo kent mesvi.

Goude beza lennet tam labour va c'hamarad, me am euz stardet he zorn em hini, me am euz santet daelou druz o fond euz va daoulagad, me am euz trugarekeat Laouik an Dero... Ha ni koz hon daou, hon euz c'hoanteat kana en eur vouez kantik ar vezventi... Plijadur ha poan hon euz bet dre ma kanemp an eil poz goude egulle... Evel ato, pa z'omp bet en em gavet gant daou boz ar merc'hed mesierezed, hon euz ranket chom a za eun teir, pe beder gueach, hon euz sellet truezuz an eil oc'h egile, ker braz oa ar beac'h euz hor c'halon... Mignon paour, a lavare d'in Laouik, petra zeu eta da veza hor Breiz ? Da beleac'h ez comp-ni mar kendalc'homp gant an hent hon euz kemeret ? Gueled goazed mesierien, ar fank oc'h ho dillad, ar goad var ho fas, goazed o vont var ho fenn er foz, an dra-ze a ioa dija poanuz, glac'haruz, evit eur c'hristen, eun den honest... Mez gueled, evit ma rear brema ker stank, merc'hed oc'h ober, oc'h eva evel goazed, o lonka evel goazed, ma na reont voassoc'h lod anezho, kaoud merc'hed e foz an hent braz, klevet merc'hed, merc'hed iaouank o storlokad dre an henchou, var ar pardaez, e mare an noz... Gueled merc'hed o lammed gant ar goazed, o furcha godellou ar goazed... Oh ! paour keaz Lan, perak n'omp-ni ket marvet kentoc'h ? Ha ni a vev c'hoaz e mesk kristenien ? Ha n'eo ket distroet amzer ar bajaned en hor bro ? Kleo ta, Lan... Deomp var hon daoulin, ha lavaromp ama raktal eur bater c'houek ma plijo gant Doue digueri ho daoulagad d'ar merc'hed a ra hon dis-honor, a zo eun dismegans evit hor Breiz, hag a helfe ober kement a vad var bouez beza guir gristenezed.

Ha ni hon daon, daoulinet var ar c'hristen park va mignon, ni hon euz pedet a greiz kalon, oc'h huanadi, evit hor merc'ked mesierezed. LAN AN DALL.

TONIC.

(C'huec'hvet pennad).

Tonic a zigasse piz d'he Vestr kement a c'houneze. Morse ne zalc'he gantha eun diner. Ne zalc'he ket zoken ar pez a roet dezan evel aluzen ep kemered marc'hadourez digantha. Ar vourc'hizez a veze souezet oc'h he velet o c'houlounder he c'hodellou evelse ker piz. « Re ziot eo ar potr-ze, evel kent, a lavare hi da Ian-Per. Mad eo dit caout eul labous ken didroel hag an dra-ze, mes ne vezo morse goaz avoalc'h. »

Ar paotric keza a voa gouscoude red dezhan beva etouez an dud divezed-ze gant pere ne gleve morse nemet sorc'hennou divalo, leoudouet, comzou euzus. Penaus

ne deuas ket da vreina etouez kement a vreina dezhan ? Kement-se so eur burzud. Red'eo e kemeret hec'h mad anezhan eur zourci dreist ; rag den e Paris ne zoffe neuze en ene paour-ze var, var da veza louket gant an droug. N'oa ket eur vouez hag a deuje da goms dezhan a Zoue hag euz he zever. Ar zouch epken euz an pezoen doa desket er gueur, gant person hec' barrez, ben dalc'has.

Goude an amzer vreo e tegaz adarre ive ar goat amzer, ha trubuilhou ar potrig-kez a deuz ive en dra. Ar goat a deuz en eun taol. An douar a voue golet a ere'h. Ar re a ioa boaz da brena marc'hadourez digant Tonig ne vezent mui cavet er pourmenadennoù ; ne lakent mui hec' fri er meaz. Tonig eta ne gave mui guanz ebet d'ho varc'hadourez.

Neuze e coezas truez oc'h ar potrig-kez, Ian-Per her gourdrouze, her bazate. Ar vourc'hizez ive a zave a enep dezhan. N'oa ken, emezho, nemet eun dieguz, eun daldalvez ; red oa zoken, emezho, e talle he gantha an arc'hant a reseve. Caer en doa diskuez he varc'hadourez chomet da verza, ne elle ket miret da veza bazate. « Goulen an aluzen-ta, ki ma zout, eme Ian-Per, pa na ouzout ober ken. Hoguen digas arc'hant d'imm e guis pe c'his, pe ar vaz a c'hoario. »

Ha setu pe seurt diguemer a veze great d'ar potric-kez bep pardaez. Ma na zigasse ket da nebeuta eis real d'he vestr, oa sur da veza bazate. Pegnement bennag a aoun en devoa rag an taoliou, e velaz ervad ne alle ket ober ar pez a c'houlennet digantha. Neuze e vancaz he galon dezhan tre. Eleac'h mont da gann guen he varc'hadourez, e chome da azeza var eun mean liars e corn eur ru nebeut darempredet bennag. Eno trist evel ar maro, ne zouje nemet en eun dra : p'eur e veze an temmen euz eur vuez ker reuzeudic !

Tremen bloaz a ioa en doa kuiteat Tonig ti he dud. Evel n'en doa den da gaout sourci anezhan, oa deut eur scrij he velet kel louz oa. He damouguo dillad a voa eat e pillou. Taolet oa dezhan eur c'hoz blousen lier, hag her goloe epad an hanv, mes pas deuz ar goanv e stracle he zent en he c'hinou, gant ar rion. He zrem a voa stenet oll. Ken treud oa, ne velet nemet he zaoulagad, ha ken diners ma c'herelle var he dret. Eleac'h caout truez outhan e troet an daoulagad divarn dezhan ; donjer a rea da velet, hag epad eur pennad breza amzer ene carantezuz ebet ne daolaz evez outhan ha ne deuas d'he zicour.

Gouscoude en unan euz ar rion darempredet gant Tonig, ez oa eun ti anavezet mad gant oll beorien ar c'harter. En ti-ze e chome eun intañvez vad hag a raine he amzer etre ar beden hag a labour. An itron Dargant a reat anezhi. Epad meur a vloaz oa bet o redeg da gas sicour d'an oll dud izomec divandro. Hoguen abaoue eur pennad he iec'het ne voa ket cre, ha ne elle ne-meur mont er meaz euz he zi. Pa varvaz he fried e chome ganthi eur map hag a rea he oll joa var an douar. Doue a deuas da guerc'hat ive ar buguel-ze digantha.

Eur c'hlenvet languiz a grogaz enha, hag e voue sammet daoust d'an oli boan a guemeraz he vam o clase he barea.

An intanvez a voa leun a feiz, ha petra bennag ma voa ar c'holl-ze eur rann-galon evithi, e soublaz he fenn dindan bolontez Doue, hag e lavare evel Job: He roet o poa din, ô va Doue! He lamet oc'h eus diganen; ra vezo benniguet oc'h hano santel!

An taol-ze gouscoude en doa he discaret hag he dinnerzet; hag iviziken ne dea nemeur er meaz euz he zi nemet evit mont d'an oferen, ha pa zea, e veze ato guisket e canv, ha ne zave he daoulagad da zellet ous netra.

Eun dervez ma zea evelse an Itron Dargant d'an ilis tosta, e voue tost dezhi coeza o steki oc'h eur potrig azezet var eur mean hars etre diou ru. An amzer a voa serijus. Dillad ar potric a voa treuzet oll gant ar glao, ha stagnet oc'h he groc'hen. C'hoaz he benn hag he ziouscoaz a voa dizolo. Eun tamig lien coaret a voa gantha o c'holo eun nebeudig marc'hadourez. Souezet oc'h he velet soret eno evelse ep finval dindan ar goal amzer, an itron a lavaraz dezhan:

— Petra rez aze, va buguel!

Ar potr ne ziscoezas ket en divije clevet.

An itron a reaz eun eil guech ar memes goulenn, ha neuze Tonig a zavaz etrezeg enhi eur zell anter varo hag a lavaraz gant eur vouez glac'harus: *paper liziri, eur guenneg ar c'haier!*

— Ne maout ket mad aze da verza marc'hadourez. Perag ne dez ket da viana da zisc'havi dindan eun or bennag? Petra c'hoarve ganez? Clan out-te?

Tonic ne lavaraz ket eur guer, hag an itron a zonjaz e voa diot. Cloc'h an oferen a voa neuze o sini; teleur a reas dezhan eur pezig ar c'hant, hag ez eas kuit buan. Ne doa ket great deg camed, na devaz keuz dezhi, hag e chomaz a za: « Bah! emezhi, kuitat Doue evit Doue eo. Red eo din gouzout penauz em ar bed gant ar potrik keaz-ze, ha me a ello ober eun dra bennag eyithan. Ha kerkent e tistro da gaout ar messaer bihan.

— Va buguel, emezhi, pe hano oc'h eus?

— Anton a rer ac'hanon, eme ar potric.

An itron a reaz eul lam hag a gasaz he dorn d'he c'halon o clevet an hano-ze; ar map e doa collet a ioa ive Anton he hano. Neuze e sonjaz e voa marteze digasset ar buguel keuz-ze var he hent gant Doue evit ma kemerje souci anezhan, eleac'h ar map e devoa collet. Lavaret a reas d'ar potric mont ganthi d'he zi. Tonig a zestumaz he bacadic marc'hadourez hag a iegas var he lerc'h.

G. M.

(Eur pennad-all eur vech-all.)

KELEIER.

An Aotrou Bras, person Plouenan, so hanvet person Huelgoat.

An Aotrou Bars, vikel e parrez Carmez, e Brest, so hanvet person Plouenan.

An Aotrou Craec, person Cléden-Poher, so hanvet person Hanvec.

An Aotrou Floc'h, bet beleg e scolach Brest, so hanvet person Cléden-Poher.

Ar redadegou kezeg a vezo e Kemper d'al lun ha d'ar meurs, an daou zervez kenta a vis gouere. An hent houarn a roi plasou guelloc'h marc'had, daouguent dre gant, en derveziou-ze. Billejou mont ha dont a vezo roet hag a vezo mad evit tri devez, an tri devez kenta a vis gouere.

Ar c'hazetennou a gomz euz eur potrig bet distagnet tre daou vez dioc'h he zorn gant eun esken. Ar medecin en deus ho stagnet, en eur lacat stellennou d'ho derc'hel, hag en eur ober ho glibia bep en amzer gant dour fresc. Abenn pemp dervez varnugent, ar potrig a elle adarre mania he zorn hag he viziet evel pa na vijent ket bet trouc'het.

PRIZ AN ED.

Table with 2 columns: KEMPER - 11 Mai and PONTNABAT - 9 Mae. Rows include Guinis, Segal, Eiz, Ed-du, Kerc'h, and Avalou-douar with prices in francs and centimes.

Table with 2 columns: MONTRouLEZ - 4 Mae and BREST - 15 Mae. Rows include Guinis, Segal, Eiz, Ed-du, Kerc'h, and Avalou-douar with prices in francs and centimes.

HENT HOUARN.

Eus a Vrest da Roazon, hag eus a Roazon da Vrest.

Table showing train schedules between Brest, Montroulez, St-Brieuc, and Roazon, with columns for Kenta Trein, Eil Trein, and Trede Trein.

Eus a Roazon da Vrest.

Table showing train schedules from Roazon to Brest, with columns for Kenta Trein, Eil Trein, and Trede Trein.

Ar Gerant: AR. DE KERANGAL.

Kemper, moulet gand Ar. DE K'ANGAL, Moulter an Escopiti

FEIZ HA BREIZ,

KELOU A BEP BRO, HA KENTELIOU VAR BEP TRA,

DIGASSET BEP SUL

Da guement Ch... goms ar brezouneec.

Eun Abonnamant d'ar Gazeten a goust:

Table listing subscription rates for different regions: Evit eur bloas, Evit c'huec'h miz, Evit tri miz, Eur gazetenn ebken.

Ar bacamant a dle beza great araog caout ar gazetenn.

KEMPER, 25 Mae 1867.

Er bloa ma e vezo er memez amzer diou daolen dispag dirag daoulagad an oll, unan e Paris, hag eun all e Rom. E Paris e lakere da ziskuez koment en deus gallet an den da ober a gaera dre he speret, dre he ijin, dre he boan, he c'hoezen, he labour. E Rom e vezo gullet ar re a zalc'h leac'h an ebstel var an donar o vont da hepori an hini so bet laket gant Jesus-Christ en ho fenn. E Paris e vezo gullet labour an dud, e Rom e vezo gullet labour ar speret-santel.

An dud n'o deus gallet dont a benn nemet a nebendou da ober an traou a ra hirio ho fougue; unan en deus savet an dra ma, hag eun all en deus savet an dra hont, hag an traou ijimussa a gavomp hirio burzuduz a so bet savet pe gomanset gant hon tadou coz, ha petra bennag ma zous eals tud hirio hag o dese c'hoant da zalc'her an oll henn evitho ho unan, ar pez so sur gouscoude eo an deus great nemet echui tamou labour o deus cavet digor vifloguen ne c'hoare ket evelse gant oberou Doue. Doue eus deus troc'het ar bed hag he laket en eun taol er stad burzuduz ma her guelomp. Jesus-Christ en deus savet he ilis var sant-Per, hag abaoue eme an ilis-ze a ve d'an oll ato caer hag ato santel. Ar speret-santel o tont en ilis-ze da rei ar zantelez d'he bugale, her gra azateg ar gomansamant hag a zalc'h ato d'hen ober. Delc'her a ra var gador sant Per eur Pap din a dra zur euz a guenta vikel Jesus-Christ. Delc'her a ra ato da rei santeleze da vugale an iliz-ze ha da rei dezho ners, pa vez izom da scuilla ho goad evit ar feiz.

Evelse ar c'hazetennou ha liziri Breuriez ar feiz a gomz adarre euz a verzerien laket d'ar maro evit Jesus-Christ. Comz a reont dreist oll euz a dri gristen nevez merzeriet e Coree, Paul O pantsi, Hiacint Hong ha Thomas Song. An tri merzer-ze zo bet mouguet goude ma o devoa gouzanvet a bep seurt tourmanchou. Unan a ioa bet pleguet eskern he zivesker dezhan, ha bruzunet he izili

ALIOU.

Ar scrijou a ve c'hoant da lacat er gazetenn a dleer da adressi oll d'an Aotrou MORVAN, Beleg e Kemper.

Ar paeamanchou a dleer da adressi d'an Aotrou SALAUN, ebken. An abonnamant a guemerer e ti an Aotrou SALAUN, librer, ru Kereon, e Kemper.

a daoliou baz. Eun all a ioa bet laket dezhan eur skoul c'houzoug hag her flastre, ha lezet evelse pell er prizon; goudeze lezet ep tam, ep eur berad dour epad pemp pe c'hoec'h devez araog beza mouguet.

An trede goude beza bet bazatet ken na elle mui finval ezel, a voue parcet en eun taol dre c'bras hor zalver Jesus-Christ; ar pez ne viras ket na voue laket d'ar maro eun nebeut derveziou goude. Da lavaret eo, an ilis santel e deuz hirio merzerien evel e doa e comansamant an ilis, ha Jesus-Christ pehini a jom gant he iliz ac'hann da fin ar bed, a ro ato d'he vugale ners ha calon da drec'hi an droug speret hag an oll dirantet.

Hano a zo da ziscleria curus missionerien ha christenien merzeriet er Japon e comansamant ar sentecvet cantvet. En ho zouez eme an tad Alfons Navaret, a ursant Dominic, an tad Per avita, a ursant Fransez, an tad Per Zuniga, a ursant Augustin, an tad Charles Spinola, a gompagnunez Jesus, Joacin Firayama, Lucia Fleises, ha cant naonteg ha pevarugent christen all lakeat evel dho d'ar maro evit ar feiz.

D'ar zul kenta ar miz, epad an tri dervez pedennou a reat en ilis sant Laurans, an taol so bet croguet er seiz hag er mezer presius lakeat da gaeraat an aoter vras. An tan a iea da lamet gant an taolennou ha doueius bras gant coatach an ilis; mes zouavet ar pap a ioa eno. Ar re ma a lamas evel luc'het da laza an tan, hag ep dale e voa mouguet. Daou anezho so bet gloazet hag eun all so bet rostet ha deveit he zillad; mes ar zoudardet cakneg-ze ne varc'hatont ket evit lacat ho buez var var pa vez izom.

— Hon tad santel ar Pap a lavare en dez all da eur vanden itronezet a ioa bet lezet da vont beteg enhan;

« D'an itronezet a zo deus d'am guellet e tigassin eur zonzh vad. Jesus-Christ so savet euz ar bez trec'h d'ar maro. Ar re o devoa he laket eno a voue discaret ha

o vont da jervicha e kear, ouspen ma teuont da vea mad evit pep-tra, a ziskues c'hoas eur c'hoant bras da fe-neanti, da gaout plijadur ha d'en em guzet ouz ho c'he-rent evit ghaloud bea liproc'h e pep renkountr.

Chervichourien, pa gavoc'h eun ty e pehini Done zo karet hag he lezen zantel heuliet, ne ghitait ket an ty-ze var digarez n'o peus ket koumanant drus avoualc'h; ma kollit euz kostes ho kodel e c'houezoc'h enz kostes hoc'h enc; hag ouspen, ar rederien plassou n'int bet biskoas istimet; mas ma ligouesac'h enn eun ty e pehini ho silvidighes zo e danjer, e pehini e zeus evid-oc'h occasion a bec'het, neuze ec'h hellit kuitaat memes araok fin ho ploa, hag ouspen, neuze e zeus evid oc'h eun obligation vras da dec'het kenta ma vo possubl.

O. H.

(Eul lizer-all eur veach-all.)

T O N I G

An Itron Dargant a gassas ar potrig d'he c'hambr' hag hen lakeas da azeza dirag eun tan mad. Eno e teuz he liou dezhan eun nebeut, epad ma poullade an dour di-outhan var leuren ar gambr-ze coaret ha kempennet caer, ar pez a lakeaz ar vatez da c'hrosmolat o velet ar gail-laren-ze.

Tonig n'en doa ket elevet pell a voa eur vouez caran-teuz o coms outhan; evelse ne voue ket pell na deuz hardizieguez avoalc'h dezhan evit lavaret kement a ioa digouezet gantha. Cridi avoalc'h a rea an Itron ar pez a lavare ar potrig dezhi: gouscoude e devoa eun tamig donetans e vije deut he dad hag he vam d'he lacat etre daouarn eun den ha ne anaient ket, dreist oll dre ma la-vare dezhi ar potrig e voa he dud, tud vad ha christe-nien guirion. Gouzout a rea ne goust ket cals d'an dud izomeg, lavaret gueter evit lacat caout truez outho. Gouscoude ar stad trist enz ar buguel a ziskoeze avoalc'h en doa dienez ha n'oa ket gueter oll ar pez a lavare.

An Itron a lakeas digas bouet dezhan. Tonig ne felle ket dezhan kemeret da guenta. Gouscoude e velet ervad en doa naoun, ha goude beza great sin ar groaz, e cro-gaz er pez a ganniguet dezhan gant ar vall a ziskuez ar re n'o deus ket debret pell so. Goude ma en doa torret he naoun, an itron a gomzas adarre brao outha, a roas dezhan haouioù tud euz he anaoudeguez eleac'h ma c'heije guerza he varc'hadourez, hag hen loscas da vont kuit. Hoguen souch mad e devoa da ober eun en-clase evit gouzout ar virionez divar benn ar potrig.

Kenta ma c'hellaz ez eas d'an ti eleac'h ma en doa lavaret Tonig dezhi e chome. Ne gavas ket Ian-Per, mes ar vourc'hizez a ioa en he stal, hag he diguemeraz seven bras. Ne voa den en davarn er mare-ze, hag evelse an itron ne velas na ne glevas netra enz ar pez a dremene dalc'h-mad eno. Ar c'hoaz fall epken hag an ear divalo euz an hostizez a zisplijas dezhi.

— Ha c'hui a elfe, emezhi, rei eun ditour bennag din divarben eur potrig a zo digouezet ganen hirio o verza

plun ha paper? Penauz ema ar buguel-ze e Pariz ep ni-cun euz he guerent?

— Ep nicun euz he guerent? eme ar c'hrac'h coz oh! n'ema ket, Itron! Bez ema gant eur c'har dezhan, eur c'henderf, hag a so eun den a zoare. Neuze ar vourc'hizez en em lakeas da zibuna eur bern gueter d'an Itron. Ar potrig, emezhi, ne ket eur goal vuguel; dige-guz eo avad ha pennog, ato mousclennet. He guenderf ne ell ket ober anezhan ar pez a gar. He guerent n'ont ket evit he vaga, ha Ian-Per, ato den a galon vad, a vras dezho lezel ar potrig da zont gantha, hag en em gargue da zeski dezhan gounit he vara e Paris. Hoguen poan en deus oc'h he lacat da ober eun dra bennag. Ar potrik so ken didalvez!

— Ha guir eo e renc digas eis real bemnoz? Nag a baper a ranche da verza evit sevel eis real!

— Ah! elevit itron, ma ve lezet en he roll ar po-trig-ze a dremenfe he zvez ep ober netra. Pa gar lacat he boan, e c'honnit eaz avoalc'h he eis real; ha neuze, evithan he unan eo, evit m'en devezo ive eur guennec bennag eun deis. Ian-Per n'en deus ket a izomeuz ar pez a c'honnit ar buguel-ze. P'eo guir itron, oc'h ens ma-delez evit ar potrig, e rafac'h eur vad vraz evithan o la-cat hoc'h anaoudeguezioù da guemeret marc'hadourez diganitha. N'eus ket a zrouguez er buguel. Evel an azen avad a c'hoare ganthan, ne aller ket ato he gas eleac'h ma karter. Ian-Per so ter, hag a ro avechon dezhan eun taolie bennag; mes goal gasset ne vez morse.

— Ho trugarecat, eme an itron, euz ar pez oc'h eus desket din divar benn ar potr. Me garje e vije bet he guenderv ana evit comz outhan eun nebeut.

— Oh! itron, eme ar vourc'hizez, mont a rai d'ho ti! An itron ne voa nemeur e chal ez ajet d'he zi. Gouscoude abalamour d'ar potrig, ec'h otreas ma zaje Ian-Per d'he c'haout; hag ez eas kuit var guementse.

— Han ta! beg moan, eme ar vourc'hizez, pa e deus an itron troet he c'hein, en em gavet mad, oud. Ma car Ian-Per ober en da c'hodel eveldonme, e vezo gallet marteze sacha eun dra bennag divar da goust!

Ian-Per eta hag ar vourc'hizez en em glevaz, evit trompla an itron Dargant. Ian-Per, great he c'haout dezhan araog mont, a ieas da di an itron, hag en em ziskuezas eno evel eun den lent, dizrong, eur zantic. Muia poan a rea dezhan oa en em glemje he guenderv anezha, hag hen oc'h ober kement a vad evithan, hag hen o poania kement d'he zeski da c'honnit he vara. Ca-ret en divije gallout lezel ar buguel ep ober netra, mes n'oa ket pinvidig avoalc'h evit he vaga evelse, ha neuze pa zaje en dro da gaout he dud, ar re-ma ken nebeut n'o doa ket a beadra d'he ziorren ma na vouie ober ne-tra. En eur guer, Ian-Per ne glaske nemet mad he guen-derf bihan.

An itron Dargant a voue tromplet gant comzou brao ar marc'hadour. Cridi a reas n'oa ket ker reuzendig ar potr evel ma lavare ez oa. Lavaret a reaz epken dezhan beza mad oc'h ar buguel; gouzaon eun nebeut he faziou,

hag e roje dezhan eun dra bennag evit he zicour da ziorren he guenderv iaouane.

Ian-Per a stouas bete'n donar evit trugarecat an itron, hag en em dennas. Hoguen an itron a vije bet distrom-plet ma e divije gallet guelet ar musc'hoars trubard a ioa var he vuzellou o tistrei d'he zavaru. Rag sonjal ha lavaret a rea outhan he unan en doa guerzet brao poultr d'an itron-ze.

Etre daou Tonig, pehini a ioa lavaret dezhan mont adarre abenn daou zervez da gaout an itron, en doa great meur a uvre. Lavaret a ioa great dezhan kemeret gourach, hag e sonje dezhan ez ea da veza tennet dioc'h tu euz ar stad reuzendig e pehini emedo. Eun tam laoue-nidiguez a ioa deut en he galon, ha gant al laouenidiguez-ze oa ive guelleat he liou ha cresket he ners. Ne bade ket gant ar vall da vont en dro d'an ti benniguet, ha kercent a m'oa deut an heur merkef dezhan, edo o skei var an or.

G. M.

(Eur pennad-all divezetoc'h.)

Hano ar Zant evit ar Sizun-ma.

DILLUN, 27 Mae. — Santez Mari Madalen pazzi, guer-c'hez Rogationou. Vijel en tri dervez-ma.

DIMEURS, 28. — Sant Ian Nepomucen, merzer.

DIMERC'HER, 29. — Sant Fidel, merzer.

DIZIQU, 30. — Ar Iaou-basc.

DIRGUENER, 31. — Santez Anjela, guerc'hez.

DISSADORN, kenta Even. — Sant Ronan, escop.

DISSUL, 2^a. — Ar sul varlerc'h ar Iaou-Basc.

An Abostol hirio:

Va breudeur, bezit fur; beillit ha pedit. Araog pep tra, ho pet'halc'h-mad carantez an eil evit eguile, rag ar garantez a c'holo cals pec'hejou. Roit, ep guina, digue-met an eil d'eguile en ho tiez. Ra rento an eil servich d'eguile ervez he c'hallout, evel tud hag a ra uzach vad beza ar pez o deus bet digant Doue.

Mar comzit, ra hier great evel pa gomsfe Doue dre ho d'haout, ma g'rit eur zervich bennag, grit hen dre ar v'haout, en deus roet Doue deoc'h; en eur guer e ke-met ar rit, ra vezo rentet gloar da Zoue dre Jesus-Christ.

Kenta Lizer sant Per. IV. 7. G. M.

KELEIER.

An Aotrou Doare, vikel er C'hastelnevez, so hanvet person Plouhinec.

An Aotrou Balcon, person Plouider, so maro en derveziou tremenet.

Eur beleg a Guerne en deus roet pemp cant lur evit lacat eur zouav e servich ar Pap.

Ao tad Patissier, a Gompagnonez Jesus, a brezeg e cathedral Kemper evit mis Mari.

Scrifa a rer deomp euz a Lanniliz ez eus en em glevet diou familh euz ar barrez-ze evit sevel pemp cant lur da lacat eur zouav e servich ar Pap.

Deut eo erfin an amzer v'rao, ar guir nevez amzer, eme Cazeten ar Meziou, hag e pep leac'h e veler gant plijadur peguement eo laoueneat ha caeret an ed hag oll frouez an douar en eun nebeut derveziou. Ar foen-neier so deut e hoas m'roc'h a vellaen enho evit an edou.

E Paris hag en eul leac'h bennag eo bet loskeet var an ed er sizun dremenet. En eul leac'h all bennag eo kereat. Hoguen en darn-vuia euz ar c'herion marc'had n'eus ket bet a chenchamant. Kementse a ro deomp tro da lavaret adarre d'al labourerien ne dleont ket ober van evit gnelet fallaen en eur guet bennag pa zontjer nebeuta. Kementse a deu abers eur marc'hadour bras bennag a laca ar pris da goza evelse ama verahont eleac'h ma c'hellont. An ed ne oufe ket manout da jom ker. Evelse e Marseil e verzer a vrema an ed ne dle er-ruout eno nemet e mis Gouere.

E Kemper ez eus heuzet er ster Odet, en derveziou tremenet, eun den iaouane mad ha fur, professor er scolach, eat d'en em deleur en dour nebeut amzer goude beza debret bouet. Cant guech ha cant all ez eus bet lavaret d'ar re a fell dezho mont da neun ne dleent morse en em lacat en dour prest goude ho frouz, rag danjer bras so evitho da gaout eun taol goad, ha bep bloaz e veler unan bennag o coll he vuez en doare-ze.

Unan euz an traou caera so en exposition e Paris, ervez cazetenou ar guet-ze, eo an Aoter vraz en deus laket an Aotrou'n Escop da ober evit cathedral Kemper.

Hon Tad Santel ar Pap Pii Nao en deus brema pemzeg vloaz ha tringuent fournis. Ganet eo an trizeg a vis Mae er bloaz 1792. Ar c'huezeg a viz even e vezo ugent vloaz abaoue m'ema var gador Sant Per. Doue i'hen c'hendalc'ho pell amzer c'hoas da c'houarn an Ihs santel!

Ar redadegon kezeg, e Brest, a vezo, a leverer, d'ar sadorn ha d'ar sul, ar c'huec'h hag ar seiz a vis Gouere.

Dalc'h mad e receiver euz eun tu bennag pemp cant luriou evit lacat zouavet en arme ar Pap. Evelse Plou-guerneviz, evelse beleien canton Plougastel-Sant-Ger-men o deus roet er sizuniou-ma d'ransou a demp cant lur.

N'eus ket pell e voa e Toulon eul lestr euz ar P'us. Tri vartolod euz al lestr-ze a voa o ponnen var an aod pa dremenez ebrou dezho eur zoudart euz ar rejiman-

chou a linen o vont da gas ho fred d'he gamaradet d'an ti gard. Oc'h he velet, rag n'en doa nemeur an doare euz eun den cre, an tri vartolod a lavaraz an eil d'eguile en ho iez.

— Han l' pet evelse a rancket da gaout oc'h unan ac'hanompo?

Ar zoudart gall a voa dioc'h costez an Alsas, hag en doa ententel ar pez a lavare an tri vartolod Prus. Setu-hen o lacat he bodou houarn guenn var an douar, hag o vont da gaout an tri ganfard. Ep marc'hata en em laca da c'hoari gant he dreid ha gant he zaouarn. Er stocad kenta ez a daou-anezho da ruilla e touez al lec'hit, hag ar zoudart bihan goude beza discaret an trede dindanha, a grie: petra, n'eus ken? Setu pe seurt respont a ro soudardet Frans d'ar re a glasc ober goap anezho.

AN TAD FELIX. — Brema ez eus eur blavez bennag daou veacher en eur c'harroz a ziskenne eun dervez en eun hostaliri a zoare en eur guarig a zepartamant an Nord. Pa zejont en hostaliri edo tud an ti o vont da leina; ne c'hortozent ket a dud diaveaz. Creis-deiz a voa o sini, hag an hostiz a voa o lavaret an *Angelus* a vouez huel araog en em lakat oc'h taol. O velet an dud estren-ma, e chomaz a za.

— Kendalc'hit da lavaret an *Angelus*, eme ar c'henta euz ar veachourien, ha ni a lavaro ive ganeoc'h. Pa voa echu ar beden, ar beacher a dennaz eur vantel vraz a voa gantha, ha pa en devoa he zennet, e veljot dindan eur.... zoudanen voug. Eun Escop euz ar Beljic oa, he vikel vraz hag hen, o tistrei euz a Baris d'he Escopti. O velet-se, an hostiz, he c'hreg hag he vugale a jomas souezet ha nec'het oll. Stonet a rejont oll dirazhan gant respet.

— Ha rei a ellit deomp da leina, eme an Escop?
 — O va Doue, eme an hostizez, n'on eus netra a guement a ve a zoare ha dereat da guinnigen deoc'h.
 — Me gred ez eac'h d'en em lacat oc'h taol, ha gullet a ran-poursachet aze eur pred vijel hag a so tre dioc'h hon doare, p'eo guir emamp er sizun santel.
 — Aotrou'n Escop, mar prijñ dibri ar pez on eus, ni ia d'ho servicha. Ni a zebro goude.

An Escop a reas da dud an ti dont oc'h taol gantha, hag e leñjont oll var eun dro.

Da guenta e voant lent, ne gredent lavaret guer couls lavaret. Aben eun nebeut gouscoude, oa eat ho lenteguez ebiou ha neuze e savas caoz.

— Aotrou'n Escop, eme an hostizez, c'hui zo o tont euz a Bariz, ha cleveit oc'h eus-hu an Tad Felix o prezeg?

— Ia, meur a vech, eme an Escop, meur a vech oun bet oc'h he silaou.

— Ha guir eo ez a kement a dud d'he glevet, e ra kement a vad evel a leverer?

— Va merc'h, eme an Escop, an Tad Felix eo ar c'henta prezeguer euz hon amzer. Bep sul, epad ar c'ho-rai, kement so a vouezieca e Pariz a ia d'he zilaou. Iliz an Itron-Varia so a veac'h braz avoalc'h evit ho diguem-eret. Morse n'eus bet muioc'h a dud o silaou ar breze-

guerien brudeta. Me garje ervad em bije gallet chom e Pariz da dremen goueliou Pasc evit guelet ar gommunion vraz a dle beza eno neuze; rag assuri a rer e vezo meur a vil euz an dud-ze hag a rai ho fasc, distroet oc'h Doue dre brezeguennou an Tad Felix.

An hostizez a deve an daelou en he daoulagad.

— Mes, eme an Escop, hag anaout a rit-hu an tad Felix ma oc'h eus kement a blijadur o cleveit comz anezhan?

— Va breur caer eo, eme an hostis.

— Hon contr eo, eme ar vugale.

— Va breur eo, eme an hostizez, hag aliciez e scriñ din. Morse avad ne lavar din eur guer euz an traou caer a livirit divar he benn.

An Tad, ar vam hag ar vugale a vouele. An Escop hag he vikel vras ne eljont ket miret ken nebeut da veski ho daelou gant ho re. G. M.

Eun doare da doma dour ep tan. — Ar gazeten *Revue de la Presse* a gomz euz eur miliner en doa cavet an tu da doma dour ep tan, ha dre-ze kuit da zevi keuneut. En eun toul ti izeloc'h evit he lenn en doa laket caeterou braz e kevr pe potin, ha varnezho e lakea teil kezeg fresc. Euz al lenn e loske dour da vont er c'haoterou-ze, ha dioc'h an tu all hen tenne dre eun duellen. An teil kezeg en deus groez avoalc'h evit toma an dour.

Cals tud so bet o velet ar peziou curius-ze staliet gant ar miliner.

PARIS. — O comz euz an *exposition*, ar gazeten *Chro-nique religieuse* euz a Doulouz a lavar:

Ar zaizon so saozon e pep leac'h; da lavaret eo e pep leac'h e verzout coton hag e skignont Biblou protestant, da lavaret eo ar scritur sacr troet gantho en ho guiz. Evelse an *exposition* vraz e deus roet tro dezho da skigna Biblou. Ne allent ket e Palez an *exposition* lacat berniou coton da verza, mes eun doare Templ saoz o deuz eno hag enha o deus berniou Levriou hag a roont da guement hini a ia da zellet oc'h an doare iliz-ze. Tad chentil a zoare, da viana evit eur guel, a so dalc'h made kichen an or, lia da guement a dremen e roont; (evit netra, na petra-ta,) eun tam euz ar scritur sacr; da hema e roont aviel Sant Marc, da hennont actou an Ebestel, da eun all lizeri sant Paul etc.

Red eo a dra zur o dese ar saozon arc'hant da scleper dioutho, evit skigna evelse evit netra, al levriougu-ze a gant miliou. G. M.

PRIZ AN ED.

KEMPER. — 18 Mae.		PONT-NABAT — 16 Mae.	
<i>Priz ar c'hant tur.</i>		<i>Priz ar c'hant tur.</i>	
Guinis....	45 lur, 60 c.	Guinis....	46 lur, 25 c.
Segal....	9 lur, 80 c.	Segal....	10 lur, 32 c.
Eiz.....	9 lur, 44 c.	Eiz.....	9 lur, 30 c.
Ed-du....	7 lur, 43 c.	Ed-du....	8 lur, 43 c.
Kerc'h....	9 lur, 44 c.	Kerc'h....	9 lur, 25 c.
Avalou-douar	3 lur, 00 c.	Avalou-douar	4 lur, 25 c.

Ar Gerant: AR. DE KERANGAL.
 Kemper, moullat gant AR. DE KERANGAL, Moullet an Escopti.

FEIZ HA BREIZ,

KELOU A BEP BRO HA KENTELIOU VAR BEP TRA

DIGASSET BEP SUL

Da guement Christen goms ar brezonec.

Eun Abonnamant d'ar Gazeten a goust:
 Evit eur bloas..... DAOU SCOUEL
 Evit c'huoc'h miz..... EUN SCOUEL
 Evit tri miz..... C'HUOC'H HON
 Eur gazeten ebken..... DAOU VERNEC
 Ar baamant a dle beza great araog caout ar gazeten

KEMPER, 1^a Even 1867.

Brema, gant pasc ar vugale, e veler bep sizun en eur barrez bennag ar zolanite gaer-ze a ra kement a vad da galon eur guir gristen. Petra dudiussoc'h evit guelet bugale c'hoas dizroug, c'hoas sae venn ho badizant var ho zro, pe mar doa bet caillaret, goalc'het mad dre sacramant ar bijnien, o receo evit ar vech kenta ho zalver hag ho Doue? Jesus a gar an oll braz ha bihan, coz ha iaouank. Gouscoude an Aviel a lavar, deomp e tiskueze muioc'h he garantez d'ar vugale ha d'ar iaouankiz.

Eun dervez digasset bugale d'he gaout evit m'en divije an vadelez da douch d'outho, ha d'ho benniguen. An diskibien, p'ar anq anient ket mad avoalc'h c'hoas ealon ho mestr, en em lakeas da gas an dud-ze kuit gantho, bugale, p'ar anq anient ket mad avoalc'h c'hoas ealon. Jesus o velet-ze, a lavaras dezho: «Lezit an vugale-ze da zont d'am c'haout; diquallit da glasc miret ioutho, rag Rouantelez an Env, so dezho ha d'ar re so heaven outho».

Rouantelez Doue var an douar eo oll denzourien an iliz; grasou ha bennos Doue roet dre zaouarn ar re so c'arguet gant an iliz, ar sacramanchou, lia dreist oll, sacramant an auter, ar sacramant bras pehin, a zigas d'an ene ar Roue euz a rouantelez an Env.

Jesus, a lavar deomp c'hoaz an aviel, a boke d'ar vugale-ze, a lakea he zaouarn var ho fenn hag ho benniguen. Hor mestr mad a lavare c'hoas: «Diouallit na zisprichac'h unan bennag euz ar vugaligou-ze. An hini en devezo roet goal skuer da unan euz ar vugale-ze a gred enhon, guelloc'h e vije dezhan e vije staguet eur mean milin oc'h he c'houzong, hag e vije stlapet e gouelet ar mor. Ha ne ket eur vech epken, mes meur a vech, eo e tiskuezas Jesus, pa edo var an douar, he garantez hag he vadelez evit an dud iaouanc.

Eun dra eo eta hag a blij meurbet d'hor zalver, lakat ar vugale da zont davethan, da lavaret eo ho zicour d'en em lacat e stad d'he reseo en eur galon dinam,

Ar scrijou a ve c'hoant da lacat er gazeten a dleer da adressi oll d'an Aotrou MONTAIGNE, Beleg, Kemper.

Ar paemanchou a dleer da adressi d'an Aotrou SALAUN, ebken. An abonnamant a guemerehe li an Aotrou SALAUN, librer, ru Kereon, e Kemper.

dougen respet dezho abalamont da Jesus en deuz ho chezaer evit diskennadon d'ho eno ene, national na deulet dre eur goal skuer bennag d'ho lacat da goll an tenzor roet dezho euz an Env.

Miz even eo miz ar galon saer d'ebstus. An oll a voar ez a bep bloas var gresc'etouez ar gristenien ar deatroun d'ar galon saer. Ne dleer ket ha zo deuzet benniguen ma cress an dud da enori ar galon zesodens benniguen hor c'haer, ar galon-ze ken eotanet d'regarant a zo vidiomp, ar galon-ze bet digoret var ar groaz evit lezel da redec dour ha goad d'ho goalc'hit d'ho benniguen per injou. Eul laouenidiguez eo evit an oll hennoc'h mad guel an garantez-ze evit ar galon saer o cresski benniguen.

E Amiens ez ead da zavele digaset d'ho fonnepel gaer en hebor d'ar galon saer evit regarant Doue da veza lakat ar c'holera da eana. Eusant Kenna jez eus da vech chapel ar galon saer, gwen euz an m'ar g'ar g'ar h' ma veler e taolennon garantez Jesus evit omps d'ho zavele en iliz Itron-Varia ar Gouidou, ez c'h'brema eun goad en honor d'ar galon saer. Labour a ve ma ranke merca an oll lec'hibu a zo enho chapelou pe aotroun en honor da galon Jesus.

Calon Jesus, ato truezuz e kerver ar bec'henen, ato prest da redek varlerc'h an danyad dranket, a ro dalc'h mad grasou burzudus d'ar re a zilaou eun dra bennag mouez he garantez. Evelse e veler brema mui evit bis-coas tud o listrei oc'h Doue, tud oc'h en em donna euz a danyaljen an errol e pehini e voant o veva nell a voa hag e pehini e voant bet ganet ha maguet cals anezho.

E Rom epken, ep comz euz ar broiou all, ez eus distroet oc'h Doue n'ous ket pet en amzevou diveza-ma. Evelse eun demezel Lewis, eus an Americ, dent da Rom da velet an taolennon soeno, e deus digoret he daoulagad d'ar virionez hag a so dent d'an iliz catolic.

Eun demezel Dalby, merc'h da eur ministr saoz, a so en em c'hreat catolikez.

Varlerc'h an re ze, peder protestantez all a renc huel o deus goulnnet beza kelennet var ar guir feiz, hag o

deuz hirio troet kein d'an errol.

Kement-se a ziskuez deomp ne c'houlenn ato calon Jesus nemet ober trugarez d'an eneoù eün, d'an eneoù dispozet mad.

Jesus a lavare he unan e voa deut da zigas an tan var an douar, ha ne c'houlenn ken nemet he velet o cregui; hag e guirionez, he velet a reomp ato o cregui e pep leac'h er c'halonou so e doare d'he zignemeret, ha mar guell an dud difeiz diframa eun danyad bennag digant ar guir bastor, e veler cant ha cant danyad all a voa dianket, hag a zonjet zoken a voa collet, oc'h en em denna euz a dre skilfou ar bleizi evit dont da glase ar guir beuri dindan ren ar pastor mad.

En dez-all, evel m'on euz he lavaret er sizuniou tremenet, hon tad santel ar Pap en doa roet da anaout e voa meneg da ziscleria euruz ar gristenien vad merzeriet er Japon brema ez eus vardro daou c'hant antercant vloas. Evel m'ema ar c'hiz, e teñjot d'he drugarecat a guement-se, ha neuze ar Pap a gomzaz evelen :

« An dud a zo rannet e diou loden vraz; eul loden a heuil Jesus-Christ, eul loden all a heuil an dispac'h. An daon rum-ze ne effont ket en em glevet, rag sonjou eur rum a ia tre a enep sonjou eur rum all... »

« Bep en amzer e veler tud skuis gant an dizurziou, an tousmac'h hag ar goallou so oc'h heul an dispac'h o tont d'en em renca etouez servicherien Jesus-Christ. Pion bennag a labour evit mad an nessa, o prezeg pe o scrifa, a dle rei courach d'an dud-ze. Red eo rei calon dezho da zifen ar virionez hag ar vertus dre guement moien so etre hon daouarn. »

« Kemeromp oll evit skuer ners calon ar verzerien-ze a vezo ep dale enoret var an aoteriou. Pa voue, brema ez euz eun nebeut bloaveziou, laket e renc ar zant eur vanden all a verzerien euz ar Japon, e voue cavet er vroze a bell meur a gant mil gristen hag o doa dalc'het mad d'ar feiz ep sicour digant den, ep ken sicour nemet hini ho a lez mad. Esperomp e teui ar vanden all-ma a verzerien laket ive e niver ar zant, da zouguen frouez nevez evit lacat ar guir feiz d'en em skigna. »

Unan euz an traou a ra muia poan ha glac'har da galon Pii Nao, eo ar stad truezus ma ema ilis Pologn. Ervez barnediguez an dud, ec'h elfet lavaret eo great gant an iliz-ze; hoguen Pii Nao ne ket dare dezhan barn an traou a zell oc'h Doue evel ma varn an dud. Pii Nao ne deu ket da fallgaloni. Cre e creiz he zempladurez, e sao he vouez, hag e carg ar bed da gas d'an ilis flastret-ze he gomzou a frealzidiguez hag he urziou. Evel ne all ket cas he unan he gomzou beteg enhi, e carg ar c'hazetenou d'ben ober, hag an oll gazetennou, fall ha mad, a ra kefridi ar Pap.

E Rom emaor a brez oc'h ober poursach evit diguemeret an dud estren a dle dont di epad miz even. Epad ar miz-ze e Rom, ne vezo, nemet an eil gouel caer varlerc'h eguile. D'an nao, sul ar Pantecost, d'ar c'houezeg, gouel an Dreindet, d'ar seiteg, an deiz ha bloaz abaoe m'eo bet choazet Pii Nao evit Pap, d'an ugent, gouel

ar Sacramant, d'an unan varnaguent, deiz ha bloaz abaoe m'eo bet curunet Pii Nao, d'ar pevar varnaguent, gouel lan, d'an nao var unguent, gouel an Ebestel sant Per ha sant Paul, d'an tregont, memor euz a zant Paul. An deizion kenta a vis gonere, eun niver braz a zervit cherien Done a vezo discleriet eurus. Red eo beza bet e Rom evit gonzout pe guer caer eo pep hini euz ar goueliou-ze eno.

Paris. Ervez a leverer, ne deus marteze en Exposition vras netra caeroc'h, netra hag a jomfe an dud kement da zell etouha, evel eun horolach great gant eun tad a gompagnonez Jesus, an tad Secchi, euz a Rom.

An horolach-ze a scrif he unan var eun tam paper dispac dirag daoulagad an oll pe du ema an avel ha pe guer cre eo, p'eur e vezo glao ha peguement a vezo, pe guen huel e sao ar barometr ha peguement a leisder so en amzer. An oll a jom a za hag a zigor braz ho daoulagad o velet deg pe zaouzeg craion o vont en dro hag o verca evel pa ve crog eun den leun a skiant e pep hini anezho. Lavaret a rer ez eus goulennet, euz a bep bro euz an Europ, oc'h an tad gouezieg hag ijinuz, ober horolachou dezho henvel oc'h an hini en deus laket da ziskuez.

Adarre eur pare burzudus. — Cazetennou an americ a gomz euz eur glanvourez, pareet en eun taol, dre zicour an den eurus lan Berchmans, euz ar Belgic. Ne ket er Belgic epken, eme ar gazeten-ze, e ra an den eurus burzudou. E leac'h all ive ez eus bet resevet grasou bras dre zicour he bedennou. Setu ama eur glanvourez euz an Americ, pareet en eun taol, an deis diveza euz eun navet great en he honor.

Ar glanvourez-ma a voa eul leanez iaouanc; ne devoa ket great c'hoas he goestlou. Coeza a reas clan, hag e taole kementa c'hoad dre heguinou, ma na vouie ket ar vedesinet petra da zonjal euz he c'hlenvet. Al louzeier ne rejont vad ebet dezhi. Eat oa ken toc'hor, ma voue nouet. Chom a reas goudeze eur mis etre ar vuez hag ar maro ep gallout kemeret tam magadurez, nan zoken eur banne dour.

D'ar c'huec'h a vis kerzu e voue comanset eun navet evithi en honor d'an den eurus Berchmans. Antronoz e collaz he anaoudeguez pehini ne deue dezhi nemet pennadougou. Indulgansou ar maro e devoa bet, ha pedennou an agoni a voa lavaret dirazhi. Gouscoude ar vuez a chome enhi, ha d'an daouzeg edo ato er stad truezus-ze. Eur boan vraz a c'honzanve.

D'ar pevarzeg, deis diveza euz an navet, en eur moment ma e doa he anaoudeguez, e c'houlennas receo he Done c'hoaz eur vech. Ne voue gallet rei dezhi nemet eur vruzunen euz an hosti, rag n'oa ket cre avoalc'h da dreizia eun hosti a bez. Kerkent ha m'e doa communit e tigoraz he daoulagad a zalc'he serret bete neuze, hag e loseaz eur griaden. Pare oa ar glanvourez kez. He izili, bet goløet gant palastrou a voa ive iac'h tre. Kerkent ec'h ellas sevel, bale, dibri, mont d'ar chapel, chom var he daoulin evel ar re all. Den ne voue ker souzezet hag

ar medecin o velet ar burzud. An daelon a deue en lie zaoulagad. Ouspen eun heur e chomas da evessat oc'h an hini a voa bet clan, hag oc'h ober goulennou outili. D'al lun varlerc'h houma a recevaz an habit hag a jomas var he daoulin epad ar ceremoni-ze, ha ne ziskueze ket beza skuis.

Lamoj. — Bez' ez euz ama, eme Sisun religius Lamoj, eur verc'hig vian hag a vez o labourat e ti labour ar pastor mad. A nebeudougou, hag abouez poania avoalc'h oa deut a benn da c'houit ugent real. Sonch ha c'hoant braz e devoa da lacat tenna he fortred gant an dra-ze. Hoguen clevet a reaz eur brezeguen divar benn hon tad santel ar Pap, eleac'h ma voue embannet e wije great eur gwest evit diner Sant Per. Antronoz ar plac'hig a guemer he ugent real, hag ho c'has d'al leanez renevez al labour. « Dalit, va mam, emezhi, roit an dra-ze d'ar Pap. » Re eo, va buguel, eme al leanez; me ia da guemeret deg guenneg epken, ha neuze pa o pezo savet deg guenneg all en ho leac'h, e lakeot tenna ho portred o poa kement a c'hoant da gaout ! Oh, va mam, eme ar verc'hig, ne ket an dra-ze a fell din; kemerit va arc'hant oll ! Al leanez ne felle ket dezhi ho c'hemeret. Mes ar plac'hig a lavaras : « Boaz oan da gas ugent real d'am zad, d'ar mare-ma euz ar bloas. Va zad a zo maro, ha brema hon tad santel ar Pap eo va Zad. » G. M.

MERZERIEU AR JAPON.

Evel ma zeus brema meneg da lacat e reng ar zant eur vanden verzerien euz ar Japon, ha ma zeus bet laket dija eul loden anezho var gajer ar re eurus, e rafe marteze plijadur da lennerien Feiz ha Breiz ober eun tamig anaoudeguez gant an dud caloneg-ze o deus scuillet ho goad ha gouzanvet ar maro evit ar feiz. Pa lonnomp huez ar verzerien o deus gouzanvet epad an tri c'hant vloas kenta euz an Ilis, e chomomp souezet hag ez eo temereet ho c'halon o velet courach ar gristenien vad-ze, allveveze a ziskuezent o creiz an tourmanchou ar re gussa hag ar prez santel o devoa da c'houzaon ha da varc'ho evit Jesus-Christ. Mad, kement so tremenet a gaera hag a vurzudussa epad an tri c'hant vloas-kenta-ze euz an Ilis, a zo tremenet ive er Japon epad ma zeo bet great eno ar brezel d'ar feiz ha d'ar roljion gristen. Gallet a reat ar gristenien calonek-ze paravia o elase gouzout p'ou en divije da guenta ar gurunen a verzerinti. Brinset, prinsezet, graguez, merc'hed iaouanc, bugaligou, a velet oc'h ober ho fourchas, o kempen ho dillad abenn an dervez braz, hag oc'h huanadi varlerc'h an dervez euruz e pehini o dient beza staguet oc'h ar groas, pe gouzaon e c'hiz all ar maro evit Doue. Ar peza a var kimp ama so tennet euz a histor an Ilis scrifet gant an Aotrou Roberbaecher, beleg.

Vardro anter ar c'huezevet cantvet, Sant Fransez-Xavier en doa prezeguet ar feiz er Japon, ha gouezet eun meur a vilene da Zoue. Sant Fransez-Xavier a reaz taohanø etrezeg ar Chin, hag a varvas nebeut amzer goude Hoguen evit beza eat ho abostol digant ho, hag euz ar groas.

christenien ar Japon a zalc'has da vouitadur var gresc; ar gristenien nevez a zewiche da wissionerien, ha beza ananier ket c'hoaz ar guir Doue. Evelse ez euz beza evit tud hiniennou euz an enez (rag Rouantelez ar Japon ne deo nemet eun toullad enez) deut couls lavaret all da veza christenien ep ma wije bet missioner ebet en ho zouaz. Ho amezien eo o devoa ho c'hlenvet. Hoguen euz an Europ ez euz ive di missionerien all, dreist oll tadou a gompagnonez Jesus, evit peur ober an eost ma en doa Sant Fransez-Xavier digoret troc'h enha, da lavaret eo, evit kenderc'hel un skigna selerjien ar feiz e mesc tud ar vroze. Epad eun tregont vloas bennag pe ouспен e voue lezet ar gristenien er peoc'h Hoguen an droug-speret a dle beza o courach o velet eun vro evelse a bez outrei ken dezhan hag o ugentillo daoulagad d'ar virionez. Evelse me capas ket ken en doa cavet an tu da lacat ober ar brezel d'ar Japon.

Kenta a voue merzeriet er Japon, euz ar groas, hag euz ar groas nevez eur pennadig all d'ar groas. Ha ma reo a veze, ez eant a vanden da dal ar groas-ze, da lavaret ho fedennou. Eur slavourez, ofisten hag euz ar groas, eur paen, eun den eriz, a re a ve bezaez, pe tra bennag ma en doa he Mestr difennet outili mont. Euz dervez o veza gouezet oa bet adarre, ez euz e courach outili, hag e c'houit drouzaz he fara mar d'ar groas. Ha reas poas ne rea ket ar maro aoun d'ar gristenien, e kondalet he d'he zervic'h euz he oll gallou evel m'e doa great bete neuze, mes ne all ket ken nebent maicout d'he d'ever e kenver Doue he c'henta Mestr; hag antronoz ez euz adarre da dal ar groas. Ar paen fuloret a redas var lte lerc'h, pa ellas gouzout e voa eat. Ne deus ket a bell n'he guelaz o tont en dro. Bezaez euz huez ar groas hag e chom d'he gortos. An gristenien calonek, ep d'heuz an distera strafont a deus beteg enha, oc'h en lakas var lie daoulin, a zouliaz he furn, hag da dentra he dibennas gant eun taol. An gristenien a gasas gant ho c'horf hag hen lakeaz en douar gant he non. Trugarecat a reant Doue euz an neuz en daouit da b'ha gouezeg-ze, hag en em gourachent da guemeret skuen dioutili.

An dra-ze ne voa nemet eun taol en eur dremen, ha ne glasket ket hoaz anskin oc'h an gristenien. Hoguen divezatoc'h e voue c'hoezet en ho c'hiz an tan euz ar bersecution.

Ar Japon, evel m'ou euz lavaret so eur vanden enez. E pep hini euz an enez-ze ez euz eun doue, Doue pe c'houarner, oспен ar brinset hag ar re var skignet ama hag ahont. Ouspen-ze ez euz en enezen yassa, daou Roue pe daou Impalaer, hag o deus gallout var ar re all oll. An daon Impalaer-ze so unan anezho evit ar religion, hag eguile evit an armeou. An diveza ma en deuz hino ar muia gallout, hag a eller da lavaret eo ar Mestr bras, rag an ners a zo etre he zaouarn. An Roue digou-se, ar re anezho dreist oll ne ket talvezet dezho dont da veza christenien, a ra alies brezel all er d'roguile. Beza Impalaer an armeou, pe evel ma lavaret eno, Tancosama, a so eun reng c'hoantec'gant ar brinset paen, ha meur

a hini a bign d'ar garg-ze dre drubarderez, dre vrezel, dre zispac'h, dre ar muntr. Unan euz ar re o doa aloubet ar rene kenta-ze dre nerz ha dre dorfejou, e voue ar c'henta oc'h en em guemeret oc'h ar gristenien hag ho class ho distruja.

Ar penn abeg euz ar gounnar a guemeraz oc'h ar guir religion hag oc'h ar gristenien, e voue ar guier hag ar fals-testeniou dougnet a enep ar vissonianien gant protestantet a Holland hag a vro-zaoz eat da ober kenvers d'ar vro-ze.

Lavaret a rer ive e tigueuzaz er mare-ze gant eul lestr a Spagn beza taolet gant an avel hag ar goal amzer var aodjou ar Japon. Al lestr-ze a ioa marc'hadourez pinvidig enha, hag ar Japoniz a grogaz enho hag ho aloubaz evit an Impalaer. Cabiten al lestr a falvezas dezhan ober aoun d'ar Japoniz. Clasc a reaz eur garten var behini eo merket ar broiou, hag eno, evit rei dezho da anaout pe guer gallouduz oa Roue Spagn, e tiskuezas dezho var beguement a vroioù e voa Mestr. Impalaer ar Japon a lakeas goulou oüthan penauz e c'helle Roue Spagn beza deut da veza Mestr var guement a vroioù, hag ar martolod reuzendig a respontas : « Cas a rer emezhan, missionerien da brezeg ar feiz da eur vro, ha pa o devez gounezet eun niver braz a dud d'ar Religion, e casser soudardet hag a deu zez da veza mistri euz ar vro-ze, rag ar vissonianien hag ar gristenien o deus gounezet en em laca a du gantho. »

Kementse a voue avoalc'h evit lacat an Impalaer e counnar, hag ep dale e falvezas dezhan distruja an oll vissonianien a ioa deut di euz ar broiou all, ha ne ket epken ar vissonianien, mes c'hoaz an oll gristenien, kement hini o doa gounezet da Zoue, gant aoun na denjent d'en em glevet gant rouanet ar broiou all evit lamet ho stajou digantha. Setu penauz e caf ato an droug-speret var an douar likizien d'hozicour da ober an droug'ha da ober ar brezel da Ilis Jesus-Christ. G. M. (Eur pennad-all eur vech-all.)

LIZIRI DA DUD DIVAR AR MEAZ.

Trede Lizer.

DA VA NIZES MADALEN PENN-SKAN.

Va Mignounes,

Rak-se ta e zes da zimizi da lannig ar c'hemener, enn-despet d'an oll, enn-despet memes d'as vam ha d'as tad pere a varvo matreze gant ho anken. — Pebes penn-skân !!!

Da viana, p'erruo ar hoan hag an nec'h, n'helli en em ghemeret nemet ouz-hit da-unan. Nann, n'helli tamall na me, na da vignounet, na memes al lounker-ze; rag hen memes, n'en deus ket a vez o kounta d'an oll he droiou kam epad ma reas he *dour de Frans*; karet a ra ispisial o c'hounta d'ar pennou avelet ha da ghemerent *bek flour* zo er vro. — Anavezet hem beus guechall eun hevelep labous ghimidig a Vourdeil, potr marchossi e ty eur markis ha behini ne rea euz ar mintin da nos nemet kounta he viziet, spura houtou he vestr, pa-

louërad he zillad hag ober he lez dian oll merc'hed euz an ail dor d'heben. Er ghis-se e prometras he zorn hag he galoun da ziou strakel euz a ghean er memes amzer hag a veikas d'a bep-unan an-heo dervos an heured, enn-hevelep doare ma rejont o diou ho souehass evit an dervos kaer ha dudius, e pep-unan an-heo o eridi e zoa ar mui karat hag an costad d'ar galoun. iaidoq beqz

Gonskoude an amzer a deue evit skriva an embannou hag an den mevez; tokoletob'hette renta diou eürus, a dec'has heb drommfill, oñ da biniou hag a zeas, me gred, eun eur jardin alb da irédek, eghis eur papilloum, euz an eil boked d'heghile. — Pebes eür vad, Madalen, ma tec'he ive da lannig, Maes nann; rak gouzout a ra e peuz eun neubeut gueneien; eun dra bennag hen deus da c'hounit, ha netra da goll. — Setu te eta, Madalen haour, etouez ar re en em skuizo toughen ho yaouankis hag a gav c'huëro an dousder a danveer peurvuia e ty an tad hag ar vam, o senti out-ho, oc'h ober ho bolonte hag o skuilla enn ho c'haloun ar poanion hag ar plijadureziou. Ne zantes mui, a leveres, dousder ebet e korn an oaled; da dad ha da vam n'hellont mui roi d'id ar pez a c'houlou da galoun; ne zontes mui nemet er stad a briedelez euz a behini e rez eur spes barados ha behini hebken, eme-de, a zironvenno da dal. Ha var ghemenese, ec'h en em daoles etre daouarn ar c'henta lakes digouezet, hag e choazes, noumpas ar furra, an honesta hag ar c'hristena, maes ar seneanta, ar sotta hag ar goassa kalkan euz ar vro; e ghemeret a rez enn-despet d'he oll vissou anavezet; c'hoant hem hije da lavaret er c'hemes abalamour d'he c'hoall renou memes; da viana en ober a rez enn-despet d'an oll bedennou ha d'an oll avizou mad, eghis ma pijs muioc'h a furnes hag a skiant eghet da gherent ha da vignounet. iaidoq beqz

Gonskoude guel petra zo digouezet gant da gamaladezet Chanig ha Perrinik dimezet da drivac'h vloa (ar pez a reas d'id gouela gant da jalouzi). Ar re-ma ive a renke kaout priejou a *drôn* ha dud ampar e pep labour, maes ive lounkerien; evel d'houit, Chanig ha Perrinik o deus kemeret heb a c'hoas enn-despet d'ho c'herent, hag antronoz ho heured ho daoulagad a zigoras, Netn a zavas gant-o; anaout a rejont ho faot maes re zivezad; ha brema e barados ar briedelez e behini e sonjent bea eürus, ne gavont mui nemet nec'hamanchou, daélou, paourente, kalounad var galounad ha fest ar ghemneuden da goan ha da as-koan. — Er c'hontrol, evessa eun neubendik ous tyeghes da c'hoar; peghen eürus eo Marik! Peghen kountant eo he fried! Peghen kaer eo gueleit ho zri c'hroquadurig enn ho zouez !! Me c'hoar vad o deus an daou bried-ze ho soanion; pion n'hén deus ket he boanion var an douar? Maes an daou-ze a zeblant en em zouten hag en em gonforti; ha Doue enn he vadeles a laka kals mel enn ho c'halur. iaidoq beqz

Maes ar re-ze ive a zo dimezet eghis ma renker, ha d'an oad ma zee gled. Ne redent ket varlerc'h eun eürusted dianavezet er bed-ma; gouzout a reant penaus ar briedelez ne de ket eghis eur marc'had behini ne bad nemet nao bloa, maes eun dlead behini a bad keit hag

suar vuez gouzout a reant penaus eno eun after ken im- portant e renker seladon kuzdar mignoubet guiron hag roavis an tad hag ar vam; gouzout a reant e renker pidi Doue evit goulen he sklerijen hag he venios; rak-se ne ankouñne hain biken ho heured eghisten epad pehiff an daou zen nevez enn em ghichen a bede ken kalouñnek, epad behini ho elat mad oñ jat d'ar bede ken zeblante ive deis an dorn an eil d'heghile, ha bhemaz an daou bried-se a leost ar pez o deus ladet; Ma ma n'edez ket ar briedelez eun barados evit ho, lid p'neubouta ne deo he nemet eun flukator dous e behini Doue rabden bep bloa an d'ho bizita. iaidoq beqz

Maes tey va merc'h baour; pe seurt heured e po? Pe seurt heured e vo honneuz, e behini ec'h en em veli neghis eur vinourez; heb tad, heb mam, ha kundaet hebken gant ar c'henta digouezet behini evit eur baine *la goutt* a zino var ar c'haier; penaus ec'h helli-te heb euzia en em brezanti eghis-se dirag da bersouñ hag e bedi da vinniga eun union millghet gant da dad ha da vam? Rak da gherent pere o deus bet kement a garante er evid-oud; pere o deus bet kement a boan ouz da zével bea willigho an heured-se great a eneb ho bolonte; hag iaidoq beqz

Gonskoude aradok pell amzer, da zaoulagad a zighoro da sklerijen an deis, eun dervos bennak goude an heured, pa vo tremenet plijadur ar derveziou kenta; pa ne zellont mui da lannig out da c'hened; pa veli enn he galoun an oll vissou ha ken neubeut a garante; pa deui ar c'homsou c'huëro elleac'h ar c'homsou flour ha tener; pa ne glevi enn da ghichen nemet kri bugale o c'houlou bara; pa ne veli enn dro d'id nemet dienez ha paourente; pa ne resev elleac'h stad nemet taoliou baz, taoliou dorn, taoliou treid, heuze, Madalen, e vo da dro da skouezab neze a tey sonj deid maes re zivezad; euz da re yaouankis re eürus epad behini ne anavezis james nag s ar hoan; nag an anken; neuze matreze e kavi gras dont iaidoq beqz

Reflectionou.

zellont nemet ouz an danvez hag a vech ho bugale evit eur banne bennak. Ar merc'hed fur ha d'ho mañ zo dilezet; hag ar plac hed d'iver gouñ zo kisker gant an oll; ar bôret kofest zo kiz dispellet ha goubet hag al lounkerien a gav abred da zimizi da bennad beza, pere alies a ghemeret just d'ober evit kaout e sebet an ocasion da hpa ive ho banne. iaidoq beqz

An dimiziou-ze ne hellont bea nemet maleürus, hag ar vugale a deui ac'hañ n'hellont ket bea kelennet mad. Tud yaouank, pa vo kistion da zimizi, gñ er ghis ma karfec'h bea great enn lestr euz ho miro. O. H. (Eur lizer-all eur vech-all.)

EUN DRAGON MISSIONER.

Er bloas 1814 e voa eur reünant dragonet e lagr B. unan euz an ofiserien, eur c'habiten goude beza bevet eur pennad evel ma vel penñissa he guensent, da lavaret eo, goude beza renet eur vuez lenn a scanvadurez, a zistroaz oc'h Doue. Hag evel ar zoudardet ne garon ket ober an traou divar anter epken, en em lakeas da ober he oll zeverion a gristen er aoun na rez. Eun dro bennag da guenta e voue great goap anezhan, e voue c'hoarzet dezhan; hoguen evel ma c'hoie er vad he gamaradet ne voa soudart ebet calonec'h evithan, e voue lezet e peoc'h.

Eun dervez gouel, eleac'h mont da glasc he ebat gant an ofiserien all, ez eas er meaz a gueur da vale. O tremen ebou da eur groas pe eur c'halvar, setu hen hag oc'h azeza var an dir e tal ar groaz, hag o tenna euz he c'hold eul levrig a zougue ato gantha, *imitation* Jesus-Christ. A veac'h e voa en em lakat da lenn ma re me gñou teir demezel, teir strinkel hag o devoa muioc'h a hoiant da c'hoarzio evit da bidie troad ar groas, oqz guoñ.

- Sell, eme unan lannig ho eun soñs ar d'ho lenn!
- Oh! eme eun all, eun romañ nevez bennag, emichans!
- Ne ket, remer ar yaouanc, lavaret er meaz eul levr a zevotion eo a so gantha!
- Eul levr a zevotion? eme ar gossa; diodez out-te?
- Mad! me lacate claoustre eo eul levr pedennou so gantha.

Ar c'hlaoustre a voue lakat, hag ar yaouanc euz an demezellet a reas beteg enha evit gouzout pe seurt levr a lenne. Ar c'habiten a ziskueaz he levr dezhi. An *imitation* oa. An demezel yaouanc a doa gounezet he c'hlaoustre. An diou all a c'hrosmole: Eun ofiser o lenn an *imitation*; c'hui oc'h deus gueleit disc'oas?

Ar yaouanc euz an ter blac h'haouanc, evel ma on eus lavaret, e devoa gounezet he c'hlaoustre. Hoguen dioc'h an noz e sonje outhi he unan er c'habiten, hag e lavare: an den-ze so soudart hag a zervich an Aotrou Doue; me a so bet diorroet mad, ha brema he zervichan nemet ar bed! Neuze e teuas da zouch dezhi euz he mam e doa collet eun neubeut a voa, hag e lroffas da vouela. Goudeze ez eas da glasc paperion scrifet ganthi e mare ma rea he fascou, hag e ranne he c'halon o velet peguen

oant souezet hag estlamet oc'h ho c'hlevet o comz e iez pephini anezho. Oll eta ez eant er meaz anezho ho unan gant ho souez, hag e lavarent : An dud-ze a gomz ouzomp ha ne dint-hi ket oll euz a C'hallée? Penauz eta ho c'hlevomp-ni o comz e iez bro pep hini ac'hanomp?

Emaomp ama Parthet ha Medet, hag Elamitet, lod o chom er Mesopotami, er Judee, e Cappados, er Pont, hag en Asi, er Phriji, er Pamphili, en Ejipt hag el Lybi tost da Cyren, lod deut euz a Rom, iuzevien dre vouenn ha tud estren deut da veza iuzevien, tud a enez Cret hag euz an Arabi, oll ho c'hlevomp o tiscleria burzudou Doue e iez pephini ac'hanomp. G. M.

Actou an Ebestel. II. 1.

KELEIER.

Evit an trivac'heanvet deiz ha bloaz abaoue merzerinti Sant Per, ar Pap, a leverer, a recevo mercou a garantez euz ar bed oll christen. Cals broiou a gaso dezhan guerziou er iez a gomzer enho. Cridi a rer ne vanco ket barzet Breiz da gas ive d'hon Tad-Santel eur vers ben-nag e brezoneg. Ar brezoneg so het ato. comzet ha desket e Rom e scolach ar *Propagand*.

An Aotrou Bernadou, Escop Gap, so hanvet Arc'hes-cop Sens, eleac'h an Aotrou Arc'hescop Mellon-Joly, pehini en deus roet he ziscarg.

An Aotrou Guilbert, person Valognes, so hanvet da Escop e Gap.

An Aotrou Gerin, person Sant Andre, e Grenobl, so hanvet da Escop en Ajen.

Ar c'hlenvet var ar chatal a zalc'h ato eun tu bennag. Brema a leverer ema er Bavier, hag ez euz aoun na rafe distruch eno evel en deus great e meur a lec'h all.

Ervez *Cazeten ar Meziou* an ed a ioa coezet eun ne-beut varnezhan er sizunvezioz tremenet. Brema e talc'h mad adarre. An amzer ne assir ket eun eost puil. Goude eun nebeut dervezioz caer, setu adarre glaoeier, muioc'h a c'hlebor evit a zo izom. Ne ve ket souez hag e rafe an amzer criz ha dourog-ma droug da lod euz a frouez an douar.

Relegou an Aotrou'n Escop ar Mintier, digasset euz a Vrozaos da Vreiz, evel ma on euz he lavaret er sizun dremenet, so bet great an diguemer ar c'haera dezho e kar Guengamp. Eno int chomet, hag int laket e bez an Aotrou Morel, bet ive Escop e Treguer. Hoguen ne dleont ket chom eno ato; divezatoc'h e vezint casset da ilisatedral Landreguer.

Ar redadegou var vor a vezo er bloa-ma, e Brest, ar pemzeg a viz eost. A bep seurt bagou a vezo o redez, ha prizioz aleiz a dle beza roet.

Beleien canton Locronan o deus savet pemp cant lur evit lacat eur zouav e servich ar Pap. Eur famill euz a Landerne e deus savet pemp cant lur all.

Lavaret a rer ema ar c'holera e Montroulez. Lod a lavar e ra distruch, lod all a lavar ne ra ket. Var guementse oar douguet ato da lavaret muioc'h evit na vez.

Eur c'helon trist so digouezet ama. E costez Pont'n-Abat hag e costez ar C'hap eo rostet oll an ayalou douar gant eun nosveziat reo. Ne ouzon ket hag hen so digouezet evelse e leac'h all.

MARVAILLOU. — En hentchou houarn e tigouez avechou troiou drol avoalc'h. Eun Aotrou, eur fri euz ar re gaera dezhan, a veache en dez all er c'hirri tan. Er memes car gantha e savaz eun Aotrou all, den a zoare, guisket e du, ha gantha eur voestic vihan. Hema pa en doa evesseat oc'h he guen-beacher, a zigoraz he voest eleac'h ma voa eur stroillad ostillou pe benviachou evel a vez gant ar vedecinet. Tenna a reas eun aoten-gam pe eur razouer-gam (histouri) hag e lavaraz d'eguile : gortozit ma troc'hin eur pennad euz ho fri, rag, e guirionez re hir eo. Piou a voue nec'het eno? Perc'hen ar fri braz. Mes ne voue ket nec'het pell. Guelet a reas buan oc'h piou en doa afer, hag e lamas gant eguile a dro-vriad. Tom e voue d'he benn o terc'hel eguile ep finval. Hen derc'hel a reas gouscoude beteg ar c'henta ean a reaz ar c'hirri tan, hag he fri a chomas gantha.

Kerkent ha ma chomjont a za, e c'halvas tud an hent houarn d'he zicour. An trouc'her friou a voue diskenet eno ha casset d'he dud digant pere e voa tec'het. Rag n'em eus ket izom da lavaret e voa eun den troet he speret e voa.

Er memes dervezioz, diou itron a voa en eur c'har tan. Guelet a reont o sevel ive er c'har eun Aotrou guisket mad hag a lavaraz ez ea da Vruj. Eun nebeut goude m'oa eat an trein en hent, ar bourc'hiz a denn he vou-chouer gouzoug, petra bennag ma voa ien. A benn eur pennad e tivise he zae; goudeze he jiletan. Edo o vont da denna eur pez dillad all bennag c'hoas pa jomaz ar c'hirri tan a za. An diou itron a grene ec'h ellit eridi. Gouscoude e touetent e ranke beza eun den troet he speret. Unan anezo, pa jomjer a za, a grias, Bruj, rag sonch e devoa en devoa lavaret ar bourc'hiz ez ea da Vruj. Kerkent hema a zisken buan, ha servicherien an hent houarn a grogaz enha, hag hen dalc'haz eno da c'hortoz he gas d'al leac'h a behini e voa tec'het. G. M.

PRIZ AN ED.

KEMPER. — 25 Mae.		PONT'NABAT — 25 Mae.	
<i>Priz ar c'hant lur.</i>		<i>Priz ar c'hant lur.</i>	
Guinis....	45 lur, 56 c.	Guinis....	46 lur, 47 c.
Segal....	9 lur, 53 c.	Segal....	40 lur, 63 c.
Eiz.....	9 lur, 80 c.	Eiz.....	9 lur, 63 c.
Ed-du....	7 lur, 74 c.	Ed-du....	8 lur, 23 c.
Kerc'h....	9 lur, 52 c.	Kerc'h....	9 lur, 43 c.
Avalou-douar	5 lur, 00 c.	Avalou-douar	4 lur, 25 c.

Ar Gerant: AR. DE KERANGAL.
Kemper, moulet gand AR. DE KERANGAL, Moulter an Escopit.

FEIZ HA BREIZ,

KELOU A BEP BRO, HA KENTELIOU VAR BEP TRA.

DIGASSET BER SUB...

Da guement Christen a goms ar brezoneg.

Eun Abonnamant d'ar Gazeten a goust:
Evit eur bloas..... DAOU SCOET.
Evit c'huoc'h miz..... EUR SCOET.
Evit tri miz..... C'HUOC'H REAL.
Eur gazeten ebken..... DAOU VENN.
Ar baemant a dle beza great araog caout ar gazeten.

KEMPER, 8 Even 1867.

Dioc'h ar frouez ec'h anavezet eur vezen, evel a leverer, da lavaret eo, dioc'h ar pez a raceun den ec'h anavezet petra eo. Dreist oll dre an oberou a garantez a ra eur c'hristen, eo az gouzout hag hen so ere ha beo he feiz. Pa deu eur voalen bennag euz an Env da skei tud eur c'harter, pa deu ar guernez pe eur c'hlenvet spegus da boueza var eur vro, neuze e veler peguement a guem so etre ar re so er guir relijion hag ar re nemaint ket, ha zoken etre ar guir gristenien vad hag ar re n'int kristenien nemet a hano. Petra so caeroc'h evit guelet, en eun amzer a zienez, tud vad o rei d'ho breudeur izomec, ne ket epken ar pez a elfent az da zioueret, mes zoken ar pez o defe izom avechou evitho ho unan? Petra zo caeroc'h, pa deu eur c'hlenved spegus da gregui en eul leac'h evit guelet christenien caloneg o redez euz an eil t' d'eguile var dro ar re glan, o renta dezho a bep seurt servich, e risel da c'hounit ho unan ar c'hlenvet, hag o lacat evelse ho buez ho unan var var evit savetei buez ar re all? Ne deus nemet ar relijion catolig hag a rofe an ners calon-ze d'an den. Ar re so er meaz euz ar guir relijion, mar roont d'ar re o deuz izom, ne roont peurlieassa nemet euz ar pez o deuz a re, ha mar tigouez eur c'hlenvet speguz, e vezint guelet o tec'het pe oc'h en em zelc'her en ho zi cloz. Morse ne vez hano anezho pa gomzer euz ar re o deus, er mareou-ze, sacrificet pep tra, madou, iec'het, buez, evit renta servich d'ho nessa. Jesus epken en deuz hor c'haret bete rei he vuez evidomp, hag he vir zervicherien epken ive o deus carantez evit ho breudeur bete lacat ho buez var var evitho.

Setu ar sonjou a deu da eun den pa lenn er c'hazeten-nou eur pennad serid bennag divar benn ar c'hlenvejou spegus. Ha sionas! eur c'harter bennag a zo ato scoet gant ar voalen-ze. Evelse, er sizun-ma e velomp ez euz en euz Mauris, hanvet guechall enez Frans, eun derzien staguz hag a ra cals distruch. En eur guear epken, hanvet Rors-Loiz hag er c'harter divardro, e deus sammet

ALIQU.

Ar scrijou a ve c'hoant da dleer er gazeten a dleer da adressi oll d'an Aotrou MORVAN, Beleg e Kemper.
Ar paeamanchoz a dleer da adressi d'an Aotrou SALAUN, ebken. An abonnamant a guemerer e dle an Aotrou SALAUN, librer, ru Keroon, e Kemper.

e c'huoc'h sizun! Bep miz var daou e hant anercant milled. Vardro daou e hant maro bennez a veze er guear-ze. Errouez an distudig laz hag ar c'hlan, eme an hini a serid kement-ma, oa eun dra guet guelet gant pebez prez ha pebez ners calon ez ea ar gristenien catolig ar dro an dud clan; guelet missionerien, tudou a gompagnonez Jesus, ha leanezet o font euz an euzi all, ha zoken euz a bebez da rei sicour d'ho breudeur scoet gant ar c'hlenvet epad ma velet ar protestanted ha zoken tud e c'harter k'chiet kuit, pe o tilezel, o chom ep rei an distera sicour d'ar re ma voant carguet anezho.

An den, pa en deus e hant avoalc'h da ober an dra, a zo ijinus da glase an tu d'ho ober. Ar re zoken roont nebeuta speret, nebeuta gouezieguez, ar re caout troiezh perein dud asperet n'o divije sonjet morse. Pa garer unan bennag, e caver ato ar pennad a zisken dezhan he garantez. Setu ama eur guentel var guementse.

Abaoue m'ema lion tad santel ar pap en dlevez, ar gristenien vad a zo diner Sant Per evit rei sicour d'ho han. Eur baotrez kez eo a garie calz an tad santel, hag e devoa c'hoant da rei ive eun dra bennag. Hoguen pe naus rei? ne devoa netra. Eo, eur iar e doa, ha setti o testum bep sizun ar vion dofet gant ar iar, o c'hlo guerza hag o cas an archant da person ho fantezaxon V.

Ia, mes ar iar a iea avechou da serabatie parc an amezeg. An amezeg a zo droug enha, pa losc eun tom var a n'hi hag e laz. Ar baotrez kez eo a reaz eur pennad mad a lenva. Penaus brema rei netra d'ho vad santel ar Pap o b? Ar gristenez vad gouscoude ne falgalomas ket. O c'heuz ta e veze, ha setu hi brema o tigas ganthi brassoc'h bec'hiou, hag e verze lod euz he c'hlenvet evit caout bep en amzer eur guenneg pe zaou da rei evit diner sant Per.

Doue a deus c'hoas gouscoude da amprou ar vaouez caloneg-ma. Coeza a ra clan, ha setu hidalc'het var he guele ep gallout sevel. Ne allo eta mui rei guenneg ebet d'ho tad santel? Eo, caout a ra c'hoaz an tu d'hen ober.

Eun amezoguez dezhi, eur c'hreg vad ha pinvidig, o velet oa chomet clan, a deus bemdez d'he gullet, hag a bigasse dezhi meur a dra. Dreist oll e tigasse dezhi bemdez eur verennat vin. Petra ra ar baourez kez-coz? Eleac'h efa ar guin-ze, hen-laca en eur vontail, ha pa-veze-leur ar vontail, her guezze, hag en doare-ze e o'helle e hoas rei eur guennec bennag da vikel Jesus-Christ.

Ha caout a rafet eun dra bennag caeroe h'evit carantez ar baourez kez-ze? Petra a oufe da ober hirroc'h eur map pe eur verc'h evit ho zad pe ho mam? Petra eo maelezh an darn vuia euz ar gristenien e kichen eun dra evelse! Nag hen a dlie lagad an Aotrou Doue para gant plijadur var ar baourez kez-ze, astennet var eur guele a boan, o tioueret a greis calon, evit hon tad santel ar Pap, ar pezh en divije great kement a vad dezhi!

Doae a voar tenna an eneou davethan pa blij gantha hag en doare ma plij gantha. Gouscoude eo euz ar skuer vad en em zervich peur liessa evit lacat ar bec'herien pe an dud difeiz da zistrei outhan. Etouez ar re a zistrous Doue, ez eus calz hag a so bet gounezet kentoc'h o velet ar vuez christen, ar vuez santel euz eun amezeg, eun amezoguez, eguet o clevet ar c'haera prezeguennou. Setu ama unan hag a serif he unan an doare ma zeo deut da veza christen. Ne heuille tam ar relijion pa deuas da jom, he bried hag hen, en eun ti eleac'h m'o devoa evit amezeien diou baourez, ar vam hag ar verc'h. Ar vam a ioa christenez vad, mes ar verc'h a ioa c'hoas guelloc'h. Ar vam a voa deut var an oad, hag abaoue meur a vloas ne voa mui guest da c'hounit he bara. Ar verc'h a voa enr plac'h iaouanc ugent vloaz. Bez'e doa eur guenet dispar ha kement so red evit plijout d'ar bed. Hoguen euzet e doa kementse oll evit chom en eun toul cambr da c'hounit bara d'he mam ha da eur breur bihan e devoa. Labourer e doa zoken kement, gouzaon e doa great ken alies naoun he unan evit gallout maga he mam hag he breur, ma collaz he ners hag he iec'het. Chom a reaz he unan d'ar guele, ha pa reaz an den ma comzomp anezhan ama anaoudeguez outhi, e voa re zivezad evit gallout he farea ha digas dezhi he ners.

Ar pezh a scoaz an den-madrist oll oa gullet pe guel iaouen oa ar plac'h iaouanc-ze var he guele a boan, gullet ne rea ket eur glemaden hag hi gouscoude o c'hounzaon poaniou bras. Mont a rea alies gant he bried da velet ar glanvourez iaouanc, hag e velaz evelse gant he zaoulagad he unan penauz e tremen eur guir gristen he amzerion diveza. Eun dervez e c'houlennas diganhi:

- Va merc'h, goal glan oc'h; poan oc'h eus?
- Ia, poan am eus, mes euruz oun.
- Petra ra deoc'h beza ken eurus-ze?
- An env-ta em eus esper da vont dezhan, ha mall zoken am eus da vont.
- Ha n'oc'h eus-hu ket a guenz d'ho mam?
- Oh! Doue pa zeu d'am guervel, en devezo soureus vamam, haneuze, me bedo kement evithi. Doue a voar peguement a fizians am eus bet enha. Neuze, o trei oc'h

an itron, e lavaraz: ha ne ket-ta, ho pried a zicouro va mam abalamour da Zoue? An itron ne ellas lavaret guer, an daelou a ioa en he daoulagad, mes hen a respontas: ia, mes c'hui a bedo ive evidhon pa viol en env.

Ar glanvourez e doa resevet he oll sacramentou. Ac'houdevez, keit ha ma voue huez enhi, ne voa mui henvel oc'h kent. Diaraog e voa eur plac'h lent hag aounic; ne gomze nemeur. Brema e comze oc'h kement a deue var he zro, hag e roe zoken da hiniennou aliou euz ar re furar. Lavaret e vije edo dija he ene e touez ar re euruz, hag e vele, hag ec'h anaie ar pezh n'e doa biscoas gullet nag anavezet bete neuze. Ar re a voa e kichen he guele a grede e vele an azele en dro dezhi, hag eun nosvez ma voa toc'horeat, he mam o veza en em laket da lenn pedennou an agoni, ar plac'h iaouanc a lavaraz goustadic: va mam, n'en em scuizit ket o lenn, emae oc'h ho lenn din.

Ar vam a eanaz hag a ias d'an daoulin, hag an den ma comzomp ama anezhan a zaoulinas neuze ive evit ar vech kenta, da viana abaoue pell amzer. A benn eur pennadig ar glanvourez a ias ker fall ma credet oa tremenet. He mam zoken a zavas da zonjal serra dezhi he daoulagad. Mes hi a lavaraz: nan, na rit ket c'hoas; varc'hoas, deiz ar Verc'hez, da beder heur. Hag e guirionez antronos, d'ar zadorn, e varvas da beder heur dioc'h ar mintin.

O veza eat d'an enterrament, an den-ma a velaz end eur vanden blac'h iaouanc, guisket dister, mes deveat hag eun ear a furnez dezho anat d'an oll. Lavaret oue dezhan edo ar merc'hed-ze e Breuriez ar Verc'hez etouez pere edo ive an hini varo, hag oant deut ive da bidi evit ho c'hoar. Dre ar sicour a recevent digant Mari eo e c'hellent beva pur e creis breinadurez kear.

Avoalc'h e voue kementse; gullet en doa penauz e varf ar re a gar Doue, pebez ners calon a ro ar vertuz. O tont euz ar vered ez eas da gaout eur beleg evit cofez he bec'hejou araog distrei d'he di, hag abaoue ez eo eur guir gristen. Setu pebez nerz en deuz ar skuer vad.

E tiez ar voullerien, e Rom, e voullere brema, e kement iez so er bed christen, huez sant ha levriouigou evit gallout heul al lidou euz a c'honel braz miz even.

Ar c'hazetennou a lavar e tleer, en hentchou houarn Rom, rei billejou mont ha dont, guelloc'h marc'had evit e mare all, azaleg ar c'henta devez a viz even beteg ar c'huerc'h var nuguent. Cridi a rer e vezo ive bihaneat ar priz el listri evit ar re a ielo dre vor da Rom evit gouel miz even.

E Rom, evel er c'heriou braz all, e tiscarer an tiez bihan ha coz evit sevel en ho leac'h tiez braz ha caer. Hoguen ar vicherourien, al labourerien, an deveziourien ne allont ket en em loja en tiez-ze; re guer int evitho. Ne deus nemet ar re o deus peadra hag a alle mont da chom e tiez evelse.

O velet kementse, hon tad santel ar Pap, pehini eo ive tad ar beorien, en deus laket sevel, e meur a leac'h euz a gear, ha dreist oll e kichen ilis sant Clemens,

iez dister, tiez ha ne deuz enhô nemet eun astach (eur zolier) pe zaou, evit loja mare had mad ar re baour, ar re so red dezho gouit ho bara divar hanez ho divre.

Ar skuer-ze roet gant ar pap ne ket chomet ep beza heuillet. Ar re binvidic, an noblans vraz a Rom, douguet ive hed ar vech evit ar beorien, a so en em glevet etrezho evi tsevel ive tiez dister d'an dud a reng izel, er vez ar skuer roet dezho gant hon tad santel.

Spagn. — E Spagn ez eus bet solaniteou caer evit gouel Sant Isidor patron ar Rouantelezh. Teir chapel nevez so savet en honor d'ar zant, hag a so bet digoret evit ar gouel. An teir chapel-ze so savet, unan anezho eleac'h ma edo ti ar zant, eun all eleac'h ma edo craon he ejennet, hag an drede eleac'h ma vifer an arched a so bet pell amzer ar c'horf santel enha ep breina.

E kear Valans ez eus bet, an daouzeg a vac, eur procession dispar, eur procession ar seurt ne veler ket. Kement a ioa a garroziou, a skeudennou sant, a vanielop, a c'hiloniou, a vandennou bugale, a vandennou muzisiemet, tud euz ar c'houenchou hag euz an hospitaliou, kement a dud o touguen goulaou pe biledou, kement a dud a ilis, ma vouet onspen peder heur amzer o lacat ar brocession var zao. Da deir heur anter e tiblasaz ar penn kenta euz an ilis, hag abenn ma voa renket pep tra, abenn ma tiblasaz imach ar verc'hez en honor da behini e reat ar brocession, hag a iea er penn varlerc'h, e voa eiz heur. Unneg heur anter e voa abenn ma voa distro.

An Aotrou Vesins, escop Ajen, a so maro eun nebeut so, evel ma on eus merket unan euz ar sizuniou tremenet. An Aotrou cardinal Donet, arc'hescop Bourdel, he vignon, en deus great he veuleudi an deis ma zeo bet laket he gorf en douar. Ar Cardinal eta pehini a anaie huez he vignon, en deus lavaret penauz, e touez pebez trubuilhou oa dent er bed-ma.

An Aotrou Vesins, emezhan, a voa he dud a reng hnel. Sonjal a ra deoc'h, me oar vad, e voue ganet e castel he dadou coz. Nan; dont a reaz er bed er bloas 1793, er bloaz-ze e pehini e voue gullet ar chafodou ruziel gant goad an dud vella a voa e Bro-C'hall. An itron, he vam, christenez vad evel ma voa an darn vuia euz an noblans, e devoa en he c'hastel eul leac'h distro evit diguemeret ar veleien a voa red dezho mont da guzet. Discuillet e voue abalamour da guementse. Croguet e voue enhi hag e voue casset d'ar prizon. Pa edo o vont en toul tenval-ze e savaz he daoulagad etrezeg ar re he c'hassé, hag e lavaraz dezho gant eur vouez glac'hurus: En han' Doue n'am lakit ket en toul-ze, ho pet truez ouzin, me a zo tost da vouilloudi. Tigred o divije silaouet ar beden-ze; mes an dud-ze a voa caletoch ho c'halon evit ar mean. « Bleizez, emezho, tost out da vouilloudi? Mad, da vleis bihan a varvo ganez! Alo! kea ebars, ha na chom ket da gunec'hat. »

En toul tenval-ze eo e teuz an Aotrou Vesins er bed.

BREMA HA GUECHALL.

Sonvale hamrad Laouic an Deroa no da anayud, gullodens yno euz al boaniou, ar dielen nihan a zisgongz n'eo ket lavuz nemunho stad, ec'h belle an atez, beza guelloc'h euz ussoe h'evitho. Ar verourien, maro evit guntal yez penitima, geroch lodet. Gouscoude na ket na d'euz meur a dra da lavaret var ho c'hont.

Ha gouzoud a ra an oll da genta pegen digz eo brema caoud eun planteraz? Diloet ma vez eur merour en d'euz forz donarou da labourad, en d'euz foennier, goarimeier evit leskel he lod, evit maga he chatal, a benn peur en devezo he savet eur verour, all braz aonalic'ho c'hoant, diogh an traou en d'euz savet ha destumet? Ha ne vezo ket red dezho reded a hep tu keit ha keit all, epad tri pevar pemp bloaz, ha marteze oc'h peun, forani arc'hant kement ha kement all, abarz ma bello en em loja a nevez? Ne ranko he ket zoken en em denna en eur pou-ha, en eun toul cambr, en eun antrik distro, epad eun daou pe da bloaz, quera eul loden euz he arc'heun, euz he chatal, abarz ma vezo gollo an atant en d'euz cavala forz da c'halloupad, da rinsa he c'hadellon, da bac'ha bannou, da voalc'h he daouarn da eun darn padred boaz da ober paea, ha paea stard, ar vad a zo enho galloud? Al lizer, great pevar, pemp bloaz, suiz euz vloaz an oak ma'z ear en atant, a zo bet constet ken. An noter, labour ket evit netra, ne zao ket pinvidic, an red o labourad evit netra. Ar paper limbi, ne vez ket tallaset hep arc'hant, hag arc'hant pull. A hont all ar Gouarnant a gar, na petra ta, dere hec'h heur e peb leac'h hag e peb aller.

Da vestr ar verour, euz abeti cantet daou, tri, mil, lug, manteze oc'h peun, var al lizer, Gonel Mikael a ja ber bloaz da bevar c'hant, scoed, da bemp cant, scoed, ha var ar marc'had, e vez an tallon da beva, e vez eun neheudik traou all, eun lam amano, eur puez jin, eur iarik pe zion, eun daou pe dri ound, eun nebeud hec'had, eur ravoderez beanak da rei, eur vech an amzer, an den mad a douc arc'hant an Aotrou, da vez an Aotrou o chom pe e Bourdel, pe e Pariz, re bell evit ma z affe he verour da bac'ha anezhan en he zorn. Ar merour nevez, en eur vond er verour, en d'euz e bloaz d'en em glevet gant an hini a ia kuit, da z'goll an merour coz evit ar vad en d'euz digasset en atant. Arc'hant eta varlerc'h arc'hant eo a ranker da toulliza a beñ tu epad pell amzer. Tro eta da skanyaad ar ialec'h hag e vije li pouner, maget gant ar guelta; da gaout dre-ze nebeudoc'h a spont rak al laer.

Ema brema ar merour en he verour, ema oc'h he labourad abaoue tri, pevar bloaz. Aber o fond adarre. Mar en d'euz ar merour eun lam skiant, eo poent mad dezan goulen ober lizer nevez gant he Aotrou. An Aotrou a gemero marvad he amzer, a c'hedo en bloaz, daou vloaz, a zalc'ho he verour, eul var ar glou, a lavaro dezan comzou bras, en euz ket da gaoud aon, a so rei a reaz.

buguel hag a lakeas souezet an oll dre ho c'hourach. Unan anezho, hanvet Lois, n'en doa nemet daouzeg vloas. An daou all, hanvet Anton ha Thomas, n'o doa ket ouспен pemzeg. Respont a reant an oferennoù e ti an tadou a urs Sant Fransez, hag ho hanoioù a ioa bet kemeret gant ar re guenta. Ma carjent gouscoude bant bet lezet; n'oa ket bet a c'hoant zoken da guemeret hano Loizic. Mes kement a reaz o vouela hag o pidr ma voue laket he hano. Goudeze e voue lavaret dezhan meur a vech tec'het; hoguen morse ne falvezas dezhan hen ober. An trede a vis guenver 1897, var dachen Meaco, e tliet troc'ha ho fri hag ho dionscouarn d'ar verzerien. Ar gouarnar ne voa ket eun den criz, ha ne lakeas troc'ha dezho nemet eur pennad euz ho sconarn gleiz. Evelse goloet a c'hoad, e vontent laket e kirri, ha casset a guar da guar bete Nangazaki, eleac'h ma tliet beza staguet oc'h ar groas. C'hoant a ioa, oc'h ho c'has evelse da ziskuez, da ober aoun d'ar gristenien; hoguen ar c'hontrol a c'hoarvezas. Ar guel zoken euz an tri buguel a lakea beteg ar baiant da gaout truez outho, ha meur a hini en em rentas christenien. Daou gristen, hag a zigase d'ar verzerien da zibri ha da efa, a voue laket gant ar goardou e touez ar re all; hag an niver anezho a ieaz evelse da c'huec'h varnuguent. G. M.

An 29 a vis Even, an Eskibien a bep bro, galvet gant hon tad santel ar Pab Pius navet, a dle en em gaout e Rom evit celebri gouel Sant Per, merzeriet 1800 vloas zo. Aotrou n'Escop Kemper ha Leon a dle ive mont da Rom, ha ni Bretounet er ped da lavaret d'hon tad santel ar Pab peguement eo caret e Breiz-Izel.

VAR DON. *Cantic ar Barados.*

Aotrou-n-Escop hon tad,
Kassit evel kannad,
Gouestlou ar Vretounet
D'ar Pab Pius navet.

Tad santel, ni c'houlent
Nerz deoc'h ha sklerijen
Da sturia hag Sant Per
E kreiz ar goal amzer.

Peden an Ebestel
A dorras an avel;
Gant fizians evel d'ho
Jesus ni a bedo.

Ni bedo ar Verc'hez
A zo deoc'h dleouez
Dre m'oc'h eus var he fenn
Lakeat eur gurunen.

Dibec'het concevet,
Mari hor mam garet,
Distroit ar brezel
A rear d'hon Tad santel.

Da bardoun Remengol,
Tad santel ni iel'oll;
Gant hon Escop eno
Evidoc'h ni bedo.

Ni bedo noz-ha-deiz.
Kenta patronez Breiz
Santez Anna vened
Fizians ar Vretounet.

Tad santel ni bedo
Evidoc'h sent hor bro,
Kaourintin, Guenole,
Paol, Tugdual, Herve.

Evel Israel guechall
Harluet e bro all,
Var-zu Rom hac hon Tad
Ni zalc'h hon daoulagad.

Kentoc'h mil guech mervel
Eguet, nann! dilezel
Ar Pab hac an Iliz!
Hennès eo hon diviz.

Binniguit, Tad santel,
Bugale Breiz-Izel,
Ar zouavet christen
A varf vit ho tiven!

25 Mae 1867.

T O N I G

(Navet pennad.)

Tonic o veza tec'het evelse, a redaz eur pennad mad. Caout a rea dezhan dalc'h mad clevet trous boutou Ian-Per o vont var he lerc'h. Mont a reas, dre voas ar bizier e jardin al Luxembourg. Eur zoudard oc'h ober goard, her guelaz, hag a deuaz evit cregui enha. Mes o veza clevet gantha perag e tec'he evelse; en devoue truez outhan, hag hen lezas d'en em guzet dindan unan euz ar skigner lakel eno da azeza. Eno var an donar noaz e tremenaz an noz. An nosvez-ze a voue hir evit ar potr kez. Ne gouscas berad. He oll izili a grene gant ar rion, ar skuisder, an derzien hag an aoun. Eun dra epen a

rea vad dezhan. Sonjal a rea outhan he unan : Hag e teufe Ian-Per d'am c'hlase, n'em c'havo ket ama ! Antronos vintin, kerkent ha ma comansaz an doriou da zigueri hag an dud da vale dre guel, Tonig a deuas sioula ma c'helle euz al leac'h ma voa cuzet, hag a ieaz e-treze ti an Itron Dargent. An Itron n'oa ket savet c'hoaz, hag ar vatez a fellas dezhi he gas en he dro, ha n'her galve ato nemet truilennig. Tonig ne reas van e-bet evit he c'hlevet. An Itron a ranke da velet. Azeza a reas var drezou an or : pa deui er meaz, emezhan, em guelo.

Setu petra zigouezas. An Itron a voue estlamet oll pa velaz ar potr keas dirazhi. Ar vech kenta m'e devoa he velet e cave dezhi ne elle ket beza treutoe'h, ha brema gouscoude her c'have c'hoas ker chenchet ma e devoa beac'h oc'h he anaout.

— Va buguel paour, emezhi, petra zo digouezet ganez?

Saveteit va buez din, eme Tonig o vont d'an daoulin; ma c'houfac'h petra m'eus bet da c'houzaon ! Gueier en deus lavaret deoc'h, mes me n'em eus ket avad. Hennez ne ket car din-me; me hen tou deoc'h var hano ar Verc'hez.

— Deuz en ti, eme an Itron; cridi a ran ac'hanout, va buguel kez. Lavar din petra so digouezet abaoue n'out ket bet ama?

Neuze Tonig a lavaraz oll kement a ioa c'hoarvezet gantha abaoue. An Itron a scrije oc'h he glévet, hag a rebeche dezhi he unan an nebeut a zoursi e devoa kemeret euz ar paour kez potric.

Bez dienez, emezhi, ne vezi ken merzeriet evelse. Me gavo an tu da lacat ac'hanout eun tu bennag. Gorto ma louzaouin dit gouli da dal.

Setu hi gant he daouarn soubl o troc'ha ar bouchadou bleo goadog, hag o voalc'hi neat ar gouli; hag epad ma hen louzaoue, e lavare dezhan comzou carantezuz evit rei courach dezhan. Neuze e roas dezhan da zibri hag her c'hempennaz evel pa vije bet he map. Pell a ioa Tonig ne voa ket bet ken eurus.

Gouscoude an Itron a deuas da zonzal e voa marteze d'ar mare-ze Ian-Per o clase ar Potrig, hag e teuje douetus d'he zi. Aoun e devoa n'her c'hasje gantha dre ners. Cuzet a reas eta ar potrig, hag e c'houre hemennas d'ar plac'h na lesje den da zont en ti keit ha ma vije oc'h ober he zro; ha neuze e redas da di eur vignonez dezhi.

He mignonez en em lakeas da c'hoarzin pa he c'hlevaz adarre o comz euz ar marc'hadour bihan.

— Paper avoalc'h am eus-me, emezhi. Gouscoude, evit ober plijadur deoc'h...

— Ne ket a baper ez euz hano brema, eme an Itron; gouscoude evit-se a zo. Neuze e contaz e pe stad reuzeudig edo ar potrig. An Itron P. carantezuz evel an Itron Dargent, a zirollas da vouela oc'h he c'hlevet.

— Mad, emezhi, digassit-hen ama. Ia, mes petra reo outhan en noz? c'hui oc'h eus nebeut a lojeis.

— Oh; na vezit ket nec'het; en eur c'his bennag hen

lojin. Ne allit ket gouscoude, he zalc'het gouscoude sur e feui he vestr diho ti d'he glase. He pouh a — Setu ive ar peza, ra aoun d'he. Tonig eta a voue casset da di an Itron P. Honna d'ar thi ne doa lojeis nemet evit he unan, hag he map a zigoueras mad ar potr. Ienna, a reaz ier, e holl he euz he guele he unan evit ober eun tamic, let dezhan e corn ar gambri. Tonig a gousc'az eno, c'huec. An Itron P. avad ne gouscas, nemeur; rag petra, heunag ma c'helle cridi evad ne dejet ket di da glase ar buguel, gouscoude epad an noz e cave dezhi dalc'h mad rizef trouz Ian-Per o lont d'he c'houlent.

Mad e doa great an Itron Dargent gas ar messaer, bihan da di he mignonez; rag araog an noz e velas Ian-Per o tigozeout. Hema da guenta a gomzas seve, a c'houlennaz oc'h an Itron ha n'edo ket guel. Tonig. Nec'het braz oa gantha, emezhan, o veza n'oa ket deuit d'he lojeis an noz tremenet.

Calon an Itron Dargent a lamme en he c'breiz. Ar zell treuz a daolas Ian-Per varnezh, a reas dezhi aoun bras. Gouscoude e lavaras dezhan gant eur vouez diehec, n'edo ket ar buguel eno hag her pede da vont en he dro.

Ha gouzout a rit-hu pelec'h eme, Ian-Per? An Itron ne vouie ket lavaret eur gaon. Ruzia a reaz ep lavaret guer. Ian-Per a evesseas mad oc'h kementse hag a guemeraz neuze eun ton otus.

— N'oc'h eus guir ebet da lamet ar potr-ze digane me, clevet a rit, Itron, emezhan, en eur stoc'h he d'ed e donar. Me am eus guir d'he gaout. Guel, n'oc'h eus gant met lenn an dra-ze! hag e casse bete guinon an Itron eun tam paper caillaret oll var behin en doa tad Tonic great eur groaz pa lakeaz evit deg vloaz he vap, etre daouarn an den estren-ze.

Han ! petra livirit a guementse eme Ian-Per?

— N'em eus netra da velet var guementse, eme an Itron Dargent. Lavaret a ran deoc'h epen ne ma ket ama, hag ho pedan d'en em denna, alesse dig'htu.

An Itron e devoa kemeret eur vouez seac'h o lavaret kementse. Savet oa en he za ha digoret e devoa an or, hag e tiskueze da Ian-Per mont er meaz. Hema ne gredas ket rebarbi hag a reas kuit; mes gourdfrouz a reaz en eur vont.

An Itron a voue c'hoas nec'het goudezel. Petra da ober oc'h ar potr? Mont a reas da c'houlent ali eun den fur e pehini e devoa calz a fizians. Hema he alias da lacat ar potrig en unan euz an tiez digor d'ar vinoret, ha da serifa da berson he barrez. Serifa euz lizer n'oa ket diaez, mes lacat Tonig en eun ti evelse a gouste arc'hant, hag an Itron Dargent ne voa ket pinvidig. Ne fellas ket dezhi gouscoude dilezel ar buguel. Mont a reas da ober eur guest evithan da eun ti scol eleac'h ne voa nemet tud jaouang a zanvez, hag e savas peadra da baea evit ar potrig da viana evit eur pennad. Dioc'htu ez eas d'he guer-c'hat ha d'he gas d'ar gouent minoré, hag araog an noz e scrifas da berson he barrez.

G. M.

(Eur pennad all eur vech all).

Hano ar Zant evit ar Sizun-ma

Epad ar sizun e-ra arreiz anobis azeis etur hanecost. Dimere her, dirguener ha dissadorn en em gal cotuerou an dreindet hag ez eus iun ha vijel.

Dissadorn Even Sul an Doue det sur. An Abostol hino :

O dounder euz a denzoriou furnez ha skiant an Aotrou Doue; nag hen a zo pell an den da ellout compren he varnediguezou na da anaout he henc'hon!

Rag piou en deuz anavezet petra en doa sonch Doue da ober? piou a so bet en he gonsail evit rei euzil dezhan? Piou en deus roet eun dra bennag dezhan da guenta evit caout digantha en distro?

Rag pep tra so digantha, pep tra so dreizhan, pep tra so enha; ra vezo gloar dezhan epken da vrayken. Evelse bezel gret.

Lizer Sant Paul d'ar Romanisted. XI. 33.

KELEIER.

An Aotrou Balcon, person Flober, so maro eun ne-bout dervezion zo.

Dioc'h ar pezh so deut heteg enhom, ec'h onzomp ez eus savet brema en escopi peadra da zerc'hel aguent zouav en arme ar Pap. Bez ez eus c'hoas re all ha ne anavezomp ket avoalc'h evit gallout ho merca. Mont a ra ive hiniennou anezho ho unan da zervicha hon tad santel, ar pezh so c'hoaz, ep mar, hag ep kem, guelloc'h. Evelse er sizun-ma e leverer deomp ez euz ead eun den iaouanc a Blouescat hanvet Ropars, d'en em lacat en arme ar Pap.

An puzegad Even breved brezoneg evit ar voazed e s'lesaven, hag euz merc'hed e Kemperle.

Al heuriz brezoneg SCOPAR MARO MAD so moulet evit an eil-guech. Moulet ead lizerennou brassoc'h, hag evelse e vezo assoc'h da lenna. Ar brassa e vez zo lakel evit lamet anezhan ar faziou asida en em zillet enha ar vech kenta.

Bestez eus roet er sizun tremenet prizion evit aguent d'ar benn ar vro. Ar priz kenta so gounezet a gant Frederic Cayader euz a Vrasparts, evit eur vers al divar benn ar vro a is. An eil priz so roet d'an Aotrou a Mairies euz a Vrest. An eil-hena en deus bet eur vedalen siuzac'h euz an iliz, hag an eil euz vedalen a gant lur.

E kear ha brezeous bet euzellenn euz an iliz euz an iliz ar c'hezec'has ar seiteg a vis. Maefi Amgrenaden a tea euz an anteroz dioc'h hresdeiz. Er c'harternou tro var dro ez eus bet hiniennadennou. Aoun isobet, mes he leveron ket e vebet euz distruhc.

An ed a leverer ne doo na kerat na guelloc'h he vare hat er sizun tremenet. An amze peza munskement a aoun d'al laborerien evel er sizunvezion all.

Evit Dnagmezan Feiz ez eus savet, er bloas tremenet, dne ar bed oll christen pemp milion, cant pemp ha daouguent mil, pemp cant e huc'h hag antercant mil. Ar Fransiepen a zao an daou fars euz ar zom-ze. Escopi Kemper, eo unan euz ar re a zao mura e Frans. Ne den nemet pemp escopi den bag hag a zalem mouch d'ithan ha c'hoas ma ve sonjet ec'h an niver a dud, ne d'ell henc'hon nemet daou escopi hag a iafe en he raog. Escopi Sant Duoc so arrog Kemper, hag an escopi d'ar c'harternou so euz a d'ost, ha lavaret a eller ep aont ebet ez eo Breiz-izel ar c'harter euz ar bed a ro m'isicoun evit cas selarjen ar feiz er broiou pall.

Er sizun-ma ar c'hazelennou a gomz euz eur verc'h pempzeg vloas, lazec gant eur vioc'h. An darvoud digouezet gant ar plac'ig-ze a zigouez stang avoalc'h gant bil-galeou var ar meaz, ha zoken avechou gant re vras. Ar verc'h-ma a zionalle eur vioc'h var bouez eur gorden en eur greizen. Evit gallout ober stam en eur ziodal he bioc'h, e troidellaz hag e scoulmaz ar gorden en dro d'he c'horf. Pazonjet nebenta e teuz eun dra bennag da spon-ta ar vioc'h pehini a c'haloupaz ac'hano evel eul loen pennfollet, o treina ar plac'ig kez d'he heul. Eun t' c'hant paz bennag ac'hano e zigouezas t'ud hac a deuz a benn da drouc ha ar gorden; mes ar verc'h paour a ioa maro. Eur guentel eo adarre ta d'ar re a vez o'zional loenet.

PRIZ AN ED.

Table with 2 columns: KEMPER - 1st Even and PONT-NABAT - 3rd Mar. Lists prizes for various locations like Guinis, Segal, Eiz, Ededu, Kerch, Avalou-douar.

HENT HOUBAN

Table with 4 columns: Hent Houban routes and distances. Includes locations like Castellin, Kemperle, Lorian, Redon, Savener, Naonel.

Ar Genant Ar DE KERAN... Kemper, moulet gant Ar... Moutier an...

REIZHA BREIZH

KILOU A BEP BRO-THA KENTELIOU VAR BEP TRA,

DIGASSET BEP SUL... Da guement... a goms ar blezoulec

Abonnament d'ar Gazeten a goust... Ar bac'mant d'ar bro-mañ...

ALIOU

Ar scrijou a ve c'hoant da lacat er gazeten a dleer da adressi oll d'an Aotrou Moutier, Beleg e Kemper. Ar pac'manchou a dleer da adressi d'an Aotrou SALAUN, ebken: An abonnant a guemere e ti an Aotrou SALAUN, librer, an Kereon, e Kemper.

Goucoude evel ne capot d'he bidi ha d'he aspidi, e falvezas dezhan caout al he-vam. Lacat a-ra eta goulen dre an telegal electrioc'ed ar rouanez he vam hag hen a elle mont d'ar redadeg-se, hag e vam a respontias dioc'htu: Nann! ha kenkent ive ar prins a zisclerias ne d'ar ket d'ar redadeg. Ar Prins Saob a roe eno-la teir guentel euz an iliz, dioc'htu a rea dre he skuer ar respet a dleer d'an deis santel, dioc'htu a rea ive an aoun a dle an oll da gaout, hag ar re vras diest oll na roient goal skuer d'ho nessa, d'ar re so d'indano diest pep tra; deski a rea c'hoaz ar respet hag ar zentidiguez a dle ar vugale d'ho zad ha d'ho mam.

Er sizun-ma ar c'helaier a Rom ne leveront nemeur a draou nevez. Hon Tad Santel ar Pap so ato iac'h ha gren. An Eskibien a ra evit ar guel-bras euz an iliz a gomans digouezout. Bez ez eus a vrema meur a hini e Rom. Ouspenn pemp cant a leveron, o deus lavaret ez rajent. Euz a bep escopi ez ar ive meur a vreg. Ne vezo ket eta eas niven an dud a iliz a vezo e Rom an iliz var-nuguent a even. An oll a zo eno e prez o'pou'rc'has pep tra evit ar gouel-ze.

Etouez an Eskibien digouezet brema e Rom evit ar gouel, ar zell a zo var Escop Perouz. Hema so Cardinal, ha n'en doa ket guel ar Pap, deg vloaz a yon. En escopi Perouz ez eus dispac'h euz goullonderet rals couenchou, distrujet Breizpezon, hag ar C'hardinal a jome etouez he zevved evit pellat ar bleis dioc'htu an ma c'heleje. Evelse ive Pii-Nao en deuz he zigumeret gant tenediguez, ha mesket he zaelou gant he re. Obistrei euz a Balz ar Pap, ar C'hardinal a gaf en eur nu tud daoulinet e dor eun ti. Eun den elan a voa en ti-ze, hag eur beleg a voa o rei dezhan he zacr'manchou diveza. KerKent e'chom a za, ha gant he zoudaden ruz hag he zillad a gardinal ez a en ti hag en em laca d'an daoulinet touez ar re all. Pa voue roet he reizion d'an den elan, ar C'hardinal a fallas dezhan mont da gas ar beleg beteg an iliz parrez, ha douguen he unan an De

vihan (*Umbellino*) a zioc'h ar Sacramant. Kementse ne ket iskiz e Rom, rag eno e veler alies tud euz ar reng huella o touguen evelse an De pa vez casset ho Doue d'ar re glan. Pa voa casset ar Sacramant d'an ilis, an dud a deve a vandennou da voda en dro d'ar C'hardinal, da boket d'he zaouarn ha da vord he zae.

NAONET. — E parrez Geste, eun den iaouang a voa eat d'en em lacat etouez soudarded ar Pap araog m'en doa tennet d'ar zort. Pa e deut ar mare da denna, en deus tennet izel. O velet-se, eun Aotrou a reng hag a noblans huel en deus roet tri mil lur da lacat eun all en he leac'h evit ma c'helje chom e servich ar Pap. An Aotrou-ze hag he Itron o devoa c'hoas kentoc'h roet daou vil lur evit sicour lacat soudardet e servich an Tad Santel.

AMERIC. — An Aotrou Timon, Escop kenta Buffalo, so maro er mis-tremenet. Setu ama hag a ziskuez ar mad en deus great ar Missioner-ze eno epad ugent vloas ma zeo bet Escop. Pa zigouezaz e kar Buffalo, ne voa enhi nemet teir ilizig evit ar gristenien catolic. N'oa ket eun ti zoken evit an Escop. Dre an escopti oll ne voa ket ouспен eun doussen beleien. Hirio ez euz en Escopti-ze eiz ugent iliz, ha lod anezho ilizou caer. E Buffalo epken ez eus daouzeg ilis parrez, hag eur gatedral, unan euz ar re gaera so en Americ. Bez' ez eus daouzeg beleg ha cant, pevar glouardi, nao gouent evit ar voazet, seis couent varnugent evit ar merc'hed, pemzeg, elandi-pe hospital, hag aleiz a diez-scol.

Guech all e Breiz-izel e veze diskuezet e c'hoariellou, passion hor zalver J. C. Tud a veze carguet da zele her leac'h Jesus, hag ar re oll a voa var he dro en amzer he bassion, hag e velet evelse ar bassion hed ha hed a bennad e pennad. Bez' on eus c'hoas meur a bennad scrit brezoneg savet evit kementse. Hirio n'eus ket hano e Breiz-izel euz ar c'hoariellou-ze. Hoguen e meur a garter e talc'her ato da ziskuez ar bassion e guis pe c'hiz. Evel-se e kear Monaco, en Itali, he diskuezer en eur procession. Setu ama penauz e vez renket ar procession-se er vez eur gazeten euz ar memes kear.

Er penn kenta e vale Adam, hag en he guichen Eva o kinniguen dezhan an tam aval. Setu eta ar pec'het orijinel abalamour da behini eo bet red d'an den caout eur zalver. Varlerc'h Adam e teu ar bassion a bennadou, skeudennet gant tud hag o deus pehini he garg da ober. Da guenta Jesus er jardin olivez, o pellaat gant he zorn dionthan ar c'halir c'huero kinniguet dezhan gant eun æl. Goude ema Judaz oc'h hijà hag o stirliakat en he zorn an tregont diner bet dezhan evit guerza he vestr. Neuze e veler Jesus stag oc'h eur pilier, ha tud oc'h he scourjeza.

Goude ema Jesus curunet a spern, eur benduen gantha en he zorn. Sant Per dispag he gleze gantha o troc'ha scouarn Malchus; ar iuzevien trouz etrezho o clasc gouzout piou en devezo sae hor zalver; Pilat o voalc'hi he zaouarn.

Guelet a rer neuze Jesus o touguen he groas; Simon oc'h he zicour; ar veronic o kinniguen dezhan eur mou-chouer. Varlerc'h e teu eur vanden hag a zoug, unan eur skeul, eun all tachou, eun all eur morzol, eun dur-kez, an oll benviou evit staga Jesus oc'h ar groas.

Goudeze e veler hor zalver staguet ha savet oc'h ar groas; toulllet he gortez gant eul lans ha roet guinegr dezhan da eva.

An diou vanden diveza eo an daouzeg abostol, ha var-lerc'h ar Verc'hez e canv, teir maouez oc'h he heul o vouela hag oc'h ober ive canv d'hor zalver.

Eun niver braz a dud estren a deu bep bloas da Vona-co da zellet oc'h ar procession-ze; ha ne oufet ket lava-ret peguemant e vez scoet an oll galonou o velet kement-se. Ar pez ne deo ket souez; rag petra so truezussoc'h evit ar skeuden euz an oll hoaniou garo en deus bet hor zalver ar vadelez da c'houzaon evidomp?

FIZIANS ER VERC'HEZ. Var ster Jen ez eus eur chapel d'ar Verc'hez hanvet Itron-Varia Montallegro. Ar chapel-ze so darempredet cals gant ar gristenien divardro, ha dreist oll gant ar vartolodet, ar besketerien. N'eus ket pell oa deut di eur glanvourez, liou ar maro varnezhi, ha ne voa guest da ober camet. He douguen a reat var eun doare gravas.

Daou vourc'hiz a ioa eno hag a c'houlennas diganthi petra oa dezhi beza laket he douguen di evelse.

— Deut oun, emezhi, da c'houlen oc'h ar Verc'hez chom beo c'huec'h mis c'hoas.

— A be garter oc'h?

— Euz a Chiavasi.

— An dra-ze so pell ac'hann, eme unan euz an daou vourc'hiz. Perag n'oc'h-hu ket eat da eur chapel all ben-nag d'ar verc'hez tostoc'h deoc'h? Kercouls e vijac'h bet pareet eno evel ama, ha guelloc'h; rag o tont ama credabl e voassai deoc'h.

— N'oun ket deut da c'houlen beza pare, mes, evel am eus lavaret deoc'h, da c'houlen chom c'huec'h mis c'hoas beo. Ama em eus bet eur c'hras digant Mam Doue, hag esper am euz e roi ive din an hini a c'houlennan hirio. Va fried a ioa den a vor. He lestr a voue kemeret gant ar forbanet. Dont a riz ama da bidi ar Verc'hez d'hen renta din. Pidi a riz gant kement a zaelou, ma cle-viz eur vouez o lavaret din e voa silaouet va feden. Hag e guirionez, va fried a zistroaz. An tadou a urs an dru-garez o doa torret he chadennou. Hirio oun intanvez ha n'em eus nemet eur verc'h a so en oad da zimizi. Cavet em euz evithi eun den iaouanc fur; hoguen an den iaouanc-ze ne all ket dimizi araog c'huec'h mis. Setu perag oun deut da c'houlen chom e buez ken n'am bezo guelet va merc'h dimezet, ha n'em eus douetans ebet na roi ar Verc'hez ar c'bras-ze din.

Ar glanvourez a lavare kementse gant eur feiz ker beo, gant eun esperans ker cre, ma lakea souezet an daou vourc'hiz, ha ma santentive ar feiz o thuna en ho c'halon ho unan. Lavaret a reant o vont diouthi n'o devoa douet ebet na roje Mari dezhi ar pez a c'houlenne. Unan anezho

a ieaas bloas goude da Chiavasi, hag eno e clevez e devoa gallet ar vam-ze guelet he merc'h oc'h eureuji, hag e voa maro eun nebeut dervezou goudeze. G. M.

HISTOR ZANTEL

TENNET DIVAR LEVR ANN EXOD.

(C'HOUEZEKVED PENNAD).

KAN MOIZES.

Pa oe tremenet ar Mor-Ruz gant pobl Doue, ha beuzet arme Pharaon, Moizes ha bugale Israël a gapaz ar gananouen-ma d'ann Aotrou, hag e leverjont: « Kanomp d'ann Aotrou, rak diskouezet en deuz enn eun doare ske-duz meurbet eo braz he c'halloud; ar marc'h hag ar marc'hek en deuz taolet er mor.

An Aotrou eo va nerz, ar penn-abeg euz va meulediou, ha bet eo va zilvidighez. Hen eo va Doue, ha kana a rinn he c'hoar; hen eo Doue va zad ha meuli a rinn he vrasder.

An Aotrou a zo bet evel eur brezeloum braz; ann holl c'halloudek eo he hano.

Kirri Pharaon hag he arme en deuz sklapet er mor; ar re ghenta euz he brinsed a zo beuzet er Mor-Ruz.

Dounderjou ar mor ho deuz ho lounket, eat int d'ar goueled evel eur mean.

Ho tourn deou Aotrou, en deuz diskouezet he holl nerz; ho tourn deou, Aotrou, en deuz darc'hoet gant ann enebour.

Gant ar vrasder euz ho kloar hoc'h euz diskaret hoc'h enebourien; kasset hoc'h euz ho puanegez, hag e deuz ho zeuzet evel ma tev ann tan eur goloen.

Gant c'houezaden ho puanegez ann douriou ho deuz en em stardet; ann dour a rede a zo choumet a zao, hag ar goagon doun ho deuz en em stardet e kreiz ar mor.

Ann enebour en deuz lavaret: Redeg a rinn varlerc'h, tizout a rinn, ranna a rinn ar preiz; va ene a vezo var he oalc'h; dic'houina a rinn va c'hleze, va dourn ho lazo.

Er c'houezaden hoc'h euz great, hag ar mor en deuz ho goloet; eat int d'ar goueled evel ar ploum, ann dour o virvi a ziouc'h ho fenn.

Etre ar re gre piou a zo henvel ouz-hoc'h, Aotrou; piou a zo henvel ouz-hoc'h, c'houi ker kaer enn ho santelez, terrubl, meuluz, hag a ra burzudou.

Astennet hoc'h euz ho tourn, hag ann dour en deuz ho lounket.

Bet oc'h bet, enn ho frugarez, hencher ar bobl hoc'h euz dasprenet; hag he zoughet hoc'h euz dre ho kalloud braz beteg al leac'h sautel ma choumit enn-han.

Ar boblou a zo savet enn ho zao, drouk a zo eat enn-ho; ar re a choume bro ar Philistined a zo bet kroghet eun hoan vraz enn-ho.

Neuze prinsed Edom a zo bet straffilet, ar c'hren a zo bet kroghet e paotred vad Moap; holl vroidi Kanaan a zo bet sounnet gant ar spount.

Ra lammo ann effreiz hag ar spount var-ze ho dirag ar c'halloudeghez euz ho preac'h; ra zeunt diflachivel eur mean, ken na vezo tremenet ho pobl, Aotrou, ken na vezo tremenet ar bobl-ma d'hoc'h, pehini hoc'h euz perc'hennet.

Ho c'has a reot, hag ho lakaat a reot evit mad var venez hoc'h heritach, el leac'h kre-ze ma choumit enn-han, hag hoc'h euz aozet hoc'h unan. Aotrou, eun ho santual, Aotrou, pehini hoc'h euz great ker kre gant ho taouarn hoc'h unan.

Ann Aotrou a reo da riken, hag enn tu all da beb amzer.

Mari, ar brofetez, c'hoar Moizes hag Aaron, a ghemeraz eun daboulin enn he dourn, hag ar merc'hed holl a zeuaz er meaz d'he heul, gant taboulinou ivez, hag e oe great daou gheur. Maria gane ar ghenta o lavarout: « Kanomp d'ann Aotrou, rak enn eun doare ske-duz meurbet en deuz diskouezet eo braz he c'halloud, ar marc'h hag ann hini a oa mar he ghoin en deuz taolet er mor. » Ar c'houblad-ze a oa dioc'h doare; diskar ar ganaouen, hag ar bobl holl hien azkane beb er gant ar re a gane ar ganaouen hed da hed.

(Ar bobl a Israël o tremen ar Mor-Ruz evit en em zavetei, a zo skeuden ar gristenien o tremen euz ar stad abec'hed d'ar stad a c'hras dre zour ar vad sant, pe dre zaelou ar binijen. « Souezet omp, eme unan e Bernard, gant ann traou a c'hoarvezaz pa zaez ar bobl a Israël er meaz euz ann Ejipt, ha n'omp ket souezet gant ar peza c'hoarvez gant ann ene mad o kuitaat ar stad a bec'hed. A-hont n'ez euz trec'het nemet Pharaon, eun den evel ann dud all; ama eo trec'het ann drouk spered he unan. A-hont ar mor na lounkaz nemet kirri, tud ha kezek; ama eo beuzet gant gras Doue gouall roudou ar galoun, hag holl armou ann enebour. » Goude eur mission, eur retred, pe ar pask, na kaer e ve klevout eur bobl kris-ten o kana ivez hag o lavarout: « Kanomp d'ann Aotrou, rak diskouezet en deuz he vrasder; hor pec'hejou en deuz taolet e goueled ar mor, beuzet int enn he dru-garez. Ann Aotrou a vezo va nerz, goude beza bet va zilvidighez. Ar boblou, da lavarout eo, enebourien va ene, a zavo da ober brezel d'in, mes ann Aotrou Doue a vezo va hencher ha va difennour, ha va dougen a rei evel eur c'hroutadur beteg al leac'h emedi o choum he-unan, da lavarout eo beteg he varadoz. (1) » H.

(1) Piou ar barz iaouanc a lakao kan Moizes e gverc'h.

MERZERIEN AR JAPON

(TREDE PENNAD)

Ar c'huec'h varnugent merzer ma on eus comzebi anezho er pennad diveza a voue laket d'ar maro e Nan-gazaki ar pemp a vis c'huevrer 1597. Oll ec'h eljont covet araog deiz ho merzerinti. Pa voue lavaret dezho edo an ofiser oc'h ho guedal var an huelen pe an dachenn eleac'h ma tlient mervel, ez ejont di dioc'htu. Eur bobl ep niver a iea d'ho heul. Ar gristenien a zigoueze gan-

ama. Ne all ket va c'halon miret da veza mantret o velet penauz e trompler hon tud divar ar meaz. Perag ar scri-fagnerien ne lakeont-hi ket ho speret hag ho ijin da zes-ki dezho ar virionez ? Perag ho deseo da vont a vanden-nou d'ar c'heriou bras da c'houzaon dienez o c'hortos coeza en dizurs ?

« Hoguen, Itron, credi a ran e sonjit evel dhon var guementse. Lezomp eta an traou-ze ha comzomp euz ar buguel oc'h eus repuget. Lennet em euz ho lizer da gue-rent Tonic. An dud keiz ! pec'het o doa ep gouzout pe- tra reant hag evit caout eun nebeut arc'hant ; ha pell so o deus keuz avoalc'h d'ho fec'het. Dorn Doue so deut da boeza varnezh ; hag anzañ a reont o doa her meritet. Ar vam a jomas clan gant keus d'he map, hag an daou c'hant lur a ioa bet evithan, hag an nebeut guenneien o doa c'hoas so eat oll da baea louzeier evit he farea. Evel-se o deus brema cals muioc'h a zienez evit diaraog. Gouzout a reont int cabluz, ha n'en em glemont ket. Mantret int avad, hag ho labourou a jom a za. »

« Abaoue ma voa eat ho map en hent : n'o doa bet ke- lou ebet anezhan. Ho lizer en deus digasset laouenedi- guez en ho c'halon ; mes poan am eus bet o clasc miret oc'h an tad da rei mil mallos d'ar marc'hadour fallagr. Ho pidi a reont var ho daoulin, itron, na lakeot mui Tonig etre he zaouarn. Rei a reont deoc'h ama, dre eur pennad scrit, pep gallout var ar buguel. Lakit-hen eleac'h ma cavo deoc'h e vezo guella evithan. Doue, itron, a rento deoc'h ar vad o pezo great evithan. »

« Me a garfe e cafe an oll vugale diframet evelse di- gant ho c'herent, eun dorn maledeluz evel hoc'h hini evit ho zenna euz ar stad scrijuz a behini oc'h eus ten- net Tonig. Ne oufet ket ober eun dra guelloc'h. Pidi a ran Doue ma teui cals da heuilla ar skuer oc'h eus roet. »

Gant al lizer-ze, an Itron ne devoa mui a aoun rag Ian-Per ; ha pa zistroaz hema adarre, sounn he benn ha rog he vouez, da c'houlén ar buguel, e voue diskue- zet dezhan ar pennad scrit deut digant he dud, hag e voue lavaret dezhan lezel he enclask hiviziken pe ez aje dirag al lez-varn.

Ar goas n'en doa begad c'hoant da vont dirag barne- rien. Gouzout a rea n'en doa netra da c'hounit. Souplaat a reas dezhan, hag e pedas an Itron da jom ep lavaret guer divar he benn. Abaoue ne denas ket var he zro.

Tonig eta en em gavaz ervad en ti ma voa laket enha. En deizioù kenta e voa lent ; hoguen ep dale e teuas da ober anaoudeguez ha d'en em blijout meurbet etouez he gamaradet. Deski a rea, ha devot e teue evel eun ael. Ober a reaz he base kenta gant ar brassa deoliez (devo- sion). An Itron Dargant a voa el levenez o velet pegue- ment e vellea ar potrig hag evit ar c'horf hag evit an ene. Gouscoude abenn eur pennad, oc'h evessat oc'h ar buguel, e velaz ervad ez oa tristidiguez en he galon. Clenvet ar gear a ioa crog enha. Ober a reas kement a c'houlennou outhan, ma c'hanzavaz outhi ar c'hoant en devoa da vont da velet he dud. An Itron a voue da guenta glac'haret o clevet kementse ; rag sonch e doa da ober euz ar potrig eun den hag eur c'hristen mad.

Sonjal a reas zoken e voa ar buguel dianaoudeg en he c'hever goude kement a vad evel e doa great evithan. Hoguen re vad christenez oa evit chom da varc'hata. Dont a reas da zoch dezhi en devoa Tonig he vam clan defot guelet he map. Lezel a reaz eta ar potrig da vont d'ar gear, hag e roas peadra da lacat he gas.

Tonig ne voue ket dianaoudeg ; ne ancounac'heas ket an Itron vad e devoa great kement evithan. Kerkent ha ma voa digouezet e ti he dud e scrifas dezhi evit he zru- garecat ha lavaret dezhi kement a ioa digouezet gantha epad he veach ! hag ac'houdevez e talc'has da scrifa de- zhi aliez. Ad Itron Dargant e devoa eur blijadur vraz o lenn al liziri-ze hag oc'h ho diskuez d'he mignonezet. « Me gaf din, eme Tonig en unan euz he liziri, eo eun ure kement so digouezet ganhen e Paris ; hoguen an dihun so mad. »

N'em eus ket izom da lavaret e teuaz adarre laoueni- diguez e ti ar potrig pa voue digouezet er gear, hag e teuaz adarre he vam var he iec'het. Hano avoalc'h a voue anezhan dre ar c'harter, ha credabl eo ar guentel- ze a viraz oc'h meur a hini d'en em zizober euz ho bu- gale. Ra deuio ar re o deus c'hoant da ober vad, da guemeret skuer var an Itron garantezuz a zaveteas Tonic.

G. M.

D'ar merc'her, 5 euz ar miz-ma, ar c'hirri tann ho d'euz casset a Guemper da Paris eun daou c'hant den bennac, goazed ha merc'hed.

Pebez kem etre hon amzer hag an amzer goz ! Guech- all hon tadou n'hallent ket mont da Paris ken diffe. Ped anez-ho ne rent hi ket ho zestamant araoc mont en hent pa vije red d'ezho mont d'ar gear vraz-se evit ho affe- riou ? Peguement a amzer ne renkent hi ket da lacaat evit mont a Vreiz-Izel da Paris ! Peguement a arc'hant ne renkent hi ket da zispign ! var ho zroad, he lakeant eur miz anter ; var varc'h, pemzecte, teir zizun ; ha pemp pe c'houec'h cant scoed ne oant ket re evid ober ho dispignou.

Brema ho bugalez vihan a ia diffeoc'h, eun devez hepken a zo avoalc'h evit-ho d'en em guemeret ; a hirio da varc'hoaz a zo avoalc'h evid en em zoarea hag en em lacaat en hent.

Petra a renkont-hi da baea evit mont a dont ? eiz, dec scoed ; pegueit a amzer evit mont a Guemper da Paris ? da hirra holl, nguent heur pe ziveur var-n-uguent. Peguement a zispignont hi evid ho magadurez epad an 10 devez a bad ho beach ? n'housomp ket he lavaret, rac darn a ia divar bouez ho ialc'h, darn all a gass gant-ho peadra da zibri. Anaout mad a reomp eun tiec hag a so eat en hent eur fascoden gant-ha ouz he vreae'h ha 10 lur kie-sal enhi. Dre an amzer a ra, ar c'hic-se a halfe trei gand an arneu, hag ouспен, en eur arruout e Paris ar valtouterien a c'houlennou digant-han an dleadou a renker da baea var ar c'hic a gasser da Paris.

Ar marvail hanvet an *Exposition* he d'euz great dire- dec da Paris filouterien a bep bro, hag euz ar re voestla

da laerez ha da drompla. He-ma a oar sevel eur montra c'horf eur baltec en doare an iskissa, hen-es a oar di- blusca eur ialc'h eguiz ma tiblusc eur c'hrouadur eun hor bro eur bigorn gand eur spillen, darn-al a zo godis- sèrien ar re finna, ha var digarez discuil hag explica d'e- hoc'h an traou caer a zo da velet, a laca ac'hanoc'h ebars, rag a ra d'e-hoc'h paea ho lein hag ho beach ar brava. Seiu ama ar pez so digouezet gand eur breton ha ne d'eo ked eur baltec-tre, rac gouzout a ra mad ar gallec ha, zoken, eun tam latin bennac.

Ar breton-ze eta a gavas var he hent eun aotrou doa- reet mad, guisket piuidic, eur gannen en he zorn ha maneguet flour. Leun eo a vadelez evid hor breton, rei a ra d'ez-han ali da zivoall oc'h ar filouterien diredet da Paris. He-ma a drugareca an aotrou madelezuz hag en em laca en he gompagnuez. Bale a reont troad-hoc'h-troad, comz a reont evel daou vignon hag en em anave- che abaoue pell amzer, ne lavaran ked avoalc'h, evel daou vreur. — C'hoand am befe, eme an aotrou, da vont da velet Castel-Versail. — Ha me ive, eme ar Bre- ton, ma na velan ked ar c'hastel-se araoc distrei d'am bro, e vezo great goab ac'han-hon, rac-se m'ar plich gueneoc'h me a ielo en ho compagnuez. — Penaoz, eme an aotrou, evuruz evend d'ober ar bale-ze gueneoc'h. — Neuze, eme ar breton, deomp hep dale. Hag an daou vignon da c'har ar *Montparnasse*. Aruet eno, an aotrou a lavaras. — Divezadic omp, ha me am beuz ezom da vont en eun tu bennac, bezit ar vadelez da guemeret eur billet evid-hon evel evid-hoc'h ha me ho cavo er zall.

Ar Breton a guemer daou villed.

— Pardon, eme an Aotrou, da veza roet d'e-hoc'h ar boan-ze ; peguement a dlean d'e-hoc'h ?

— Goude ni en em glev ; d'eomp er c'hirri, rac ne glevit-ni ket mouez an hini a gri : Er c'hirri ! er c'hirri !

Seul vui ma ie ar breton gand he gamarad aotrou, seul gontanoc'h e oa anezhan. — Pebez cavaden, a lavare ar breton enhan he-unan, am euz me great ! ma, guir eo, tud va bro ne d'int ket ken deread hag an dud-ma. Ma n'em bije ket bed eun den evel he-ma da explica din Castel ha marvailou Versail, n'em bije great nemed guelc'h, n'em bije anavezet netra.

Goude beza redet Castel Versail, ar breton a lavaras en d'oa naon ha c'hoant dibri. — Ha me ive, eme an Aotrou — Leina reont ar brava. Tri, pevar meuz a c'houlennont ha daou pe tri seurt guin, hep conta ar c'haffe hag ar guin-ardant.

Pa one achu gant-ho, an aotrou a lavaras : — Pa eo guir hoc'h euz bed ar vadelez da baea betec vrema, pa- eit c'hoaz ha dalc'hit mad d'ho cont evit ma paein va anter araog hon disparti. — Me laca, eme ar breton, ne deomp ket d'en em zispertia dioc'h-tu. A Paris omp deuet, n'en em zispertia nemed e Paris, hag eno e ren- kimp hor c'honchou.

Ar breton eta a guemer ar billejou evid an distro, evel en d'oa great er penn kenta, hag hon daou vignon en hent. Arruet e Paris he tiskennont laouen braz an eil hag eguile.

— Sel, eme an aotrou, ha ne d'eo ked an Itron Codam a velan-me deut ? va gortozit, mignon, eun tachad, ma velin — hag he red. — Caer en devoa ar breton gortoz, he vignon ne zistroas ket. He vignon ne oa nemed eur filoud.

Hano ar Zant evit ar Sizun. —

DILLUN 17. — EME AN AOTROU : Sant Herve.

DIMEURS 18. — Sant Barnabas, abostol.

DIMERC'HER 19. — Santez Juliane, guere'hez.

DIZIQU 20. — GOUEL AR ZACRAMANT.

DARGUENER 21. — Sant Lois, Gonzag.

DISSADORN 22. — Euz a eisvet ar Zacramant.

DISSUL 23. — Solanite ar Zacramant.

Abostol gouel ar Zacramant.

Va breudeur, an Aotrou he unan en deus desket din ar pez am eus desket ive deoc'h divarben ar pez a reaz hor Zalver Jesus en nesrez ma tie beza livriet d'ar maro. Kemeret a reas bara, ha goude beza rentet grasou d'he dad, hen torraz hag e lavaras d'he ebestel : Kemerit ha debrit, an dra-ma eo va elhorf a vezo livriet evidoc'h : grit kement-ma e memor ac'hanon. Ar memes tra a reaz goude coan evit ar c'halir. He rei a reas dezho en eur lavaret : ar c'halir-ma eo ar guevidiguez nevez great gant va goad. Grit kement-ma e memor ac'hanon bevec'h ma lien evot.

Rag bevec'h ma tebrot ar bara-ma ha ma c'hevot ar c'halir-ma, e fislcriot maro an Aotrou. Rag-ze n'ou bennag a zebro ar bara-ma pe a evo calir an Aotrou ep beza din, a vezo cabluz a gorf hag a c'hoand an Aotrou. Ra laca eta an den evez outhan he unan evit guelet hag hen a dle dibri ar bara-ma, hag eva ar c'halir-ma. Hag an hini a zebr ar bara-ma hag a ev ar c'halir-ma ep beza din, a zebr hag a ev he varnediguez, he gondaonion, dre ne respet ket evel m'eo dlet corf an Aotrou.

Kenta lizer S. Paul d'ar bopt a Corinth. XI. 23. G. M.

LEVR AL LABOURER.

Dispac'h hag emgan etre ar gwenan.

P'az eont d'ann emgan, (rag etre ar mammou Aliez e sav trouz, dispac'h ha brezelion.) Her gouzout a reot, o welout ho kwenan, Disent ha divergont, gant counnar o crenan. Evel pa ve galvet d'ar brezel soudarded, C'houi gredfe enn ho mesk clevout son ann dromped. Ind'n em zestum, bella, n'em laka e counnar. A fouet ho diwaskel, a ro lufr d'ho diwar, Gand ho bec hag ho dent a lemm broud ho flemmou. Hag enn dro d'ho Rouanez n'em stard a vandennou. A heg ann enebour, her galv a vouez huer. Na sonjont holl neuze nemet barz ar brezel.

Kentre' vel ma welont ann amzer o splanaat, Ann heol o 'nem ziskouez, ann avel o clonaraat; 1475
 Enn ouabr euz ann amzer, 'n em zerc' hel pa hellont, E teuont holl ermez, ha stard en em gannont.

Gand eur galoun nerzuz, epn eur c'horvic dister, Pep Rouanez he-unan a zispriiz ann danjer, A zalc'h mad eun emgan bet' ar re divezan, 1480
 Ken na vezo rekiz d'unan monet war-dran. Mes goude ann emgan, evit mirout ar peoc'h, Hag evit ma vezo ann dispign bihanoc'h. Lazit enn ho taouarn ar Rouanez iaouankan, Ha lezit er rusken ar gossa he-unan. 1485

Mar ho gwelit ive o kuitaat ho zier, O lezel al labour, o nijal eun amzer; Mar fell d'e-hoc'h ho distrei euz ho holl c'hoariou, N'ho euz nemet trouc'ha diwaskel ar mammou; Neuze na gredint ket sevel ar baniel, 1490
 Evit mont da c'hoari, pe'vit mont d'ar brezel,

Le Belair J. M. D. R.

KELEIER.

An Aotrou Pierre, vikel e Lesneven, so hanvet person Plouider.

An Aotrou Saleun, professor e Pont-Croaz evit skiand ar jed pe an nivererez (mathématiques), so maro en derveziou-ma.

Scrifa a rer deomp euz a Blabennec :

Beleien canton Plabennec o deus savet etrezo pemp cant lur evit maga ha guisca eur soudard e servich hon Tad santel ar Pab, a tri ugent lur ouспен evit diner sant Per.

Etouez hanoiou ar re so bet er C'honcour evit al labourerien douar, e Morbihan, e cavomp an Aotrou De Molon, euz a Loctudy, pehini en deus bet c'huec'h priz; an daou Feunteun, euz a Ergue-Armel, an tad hag ar map; an tad en deus bet pevar briz hag ar map unan; Olivier hag Ar Goff, euz a Guerfeunteun, o deus bet tri briz etrezho ho daou.

Eun tamig eo falleat var an ed er sizun dremenet, ervez Cazeten ar Meziou. Ar pen abeg a guementse, eme ar gazetenn-ze, ne deo ket ma ve calz ed etouez an dud, ne deo ket ma ve doaret caer an cost a zeu; ne deus ken penn abeg nemet ar re zo o prena a voar guelloc'h en em denna evit ar re so o verza; ar re so o prena a voar en em glevet, hag ar re so o verza n'o deuz en em glevet morse, ha n'en em glevint biken credabl.

A hent all ne rear nemeur a glemou divar benn an eost. An nosvez reo avad a ioa bet etre an tri varnugent hag ar pevar varnugent a Vae e deus great calz distruch var ar guiniennou ha var ar froueziou.

Eun den a garg euz a gueur Tour a veule, en dez-all, ar scouezet guenn euz ho c'hourach da vont var dro an dud elan epad ma voa ar c'holera eno :

« Oh ! Aotrou, eme unan anezho, kementse ne ket calz a dra. Ar scouezet guenn so evel ar guer var eur prenest, pa vez torret eur veren, e laker eun all en he lec'h ! »

Er c'heriou ez eus merc' hed hag a zo ho micher prena digant an dud divar ar meaz, amann, viou, etc., da verza adarre. Bez' o deus, var unan bennag a dachen-nou kear, eur stal da verza ho marc'hadourez. An amann prenet gantho a vez kempennet, fichet a zoare evit he verza keroc'h. Eno n'eus netra da lavaret. Hiniennou ive a gaf an dro da verza pevar lur pa n'o deus prenet nemet tri. E pep leac'h e tigouez burzudou. Ia, mes potred ar polis ne gredont tam d'ar burzudou, hag a deu eur vech en amzer da boeza ho amann d'ar merc'hed-ma da velet hag hi a laca pevar c'hartouren da ober lur.

En dez-all-ta, me ne ouzon ket pe e Brest pe e Roazon oa, setu potr al lezen o tont da ober he dro. Unan euz an asguerzerezet a vouie ervad e doa pinset lod euz he fileradou amann, ha n'oa ket tre a bevar c'hartouren e pep lur. Penaus da ober? Oh ! ne ket ijin na speret eo a vane d'ar merc'hed-ma. Daoublega a ra azioc'h he fileradou amann, ha var digarez ober eur c'hempennig dezho, e tenn soufil euz a c'hodel he zavancher eur pez ugent real da zancla e pep hini euz ar re a voa re scanv. Gant penez ar pez ugent real-ze e voant pounner avoalc'h.

An dra-ze a voue great buanoc'h evit n'hen lavaran-me ama. Gouscoude ez oa eno merc'hed all deut da brena amann, hag unan anezho a voa bet lem avoalc'h he lagad evit gullet an dro a voa great. Setu-hi dioc'htu da varc'hata ha da brena eun tam amann e pehini ez oa laket eur pez ugent real. An asverzerez (revanderez) e doa c'hoant d'he lacat da guemeret eun tam all :

— Kemerit enhont, emezhi, so fresc'oc'h ha guelloc'h blazet.

— Nan, nan, eme houma; hema am eus tavet, hag hema a blij din ! Ha red e voue lezel al lur amann-ze da vont ganthi. Ar pouezer a voa eno, ha perc'hen an amann ne alle lavaret guer. Ar pez a rea marteze muia poan dezhi, ne ket coll he fez a ugent real oa, mes beza red dezhi dere' hel sioul diabarzenhi ar pez en divije great kement a vad dezhi loskel divar he c'halon. G. M.

PRIZ AN EB.

KEMPER. — 8 Even.		PONT-NABAT — 6 Even.	
<i>Priz ar c'hant lur.</i>		<i>Priz ar c'hant lur.</i>	
Guinis....	45 lur, 43 c.	Guinis....	49 lur, 43 c.
Segal....	40 lur, 24 c.	Segal....	42 lur, 75 c.
Eiz.....	9 lur, 84 c.	Eiz.....	40 lur, 76 c.
Ed-du....	7 lur, 64 c.	Ed-du....	9 lur, 73 c.
Kerc'h....	9 lur, 67 c.	Kerc'h....	44 lur, 30 c.
Avalou-douar	5 lur, « c.	Avalou-douar	4 lur, 95 c.

Ar Gerant: AR. DE KERANGAL.

Kemper, moulet gand AR. DE KERANGAL, Moulet an Escopi.

FEIZ HA BREIZ,

KELOU A BEP BRO, HA KENTELIOU VAR BEP TRA.

DIGASSET BEP SUL

Da guement Christen a goms ar brezouneq.

Eun Abonnamant d'ar Gazeten a goust :

Evit eur bloas.....	DAOU SCOUBET.
Evit c'huec'h miz.....	EUR SCOUBET.
Evit tri miz.....	C'HUEC'H REAL.
Eur gazetenn ebken.....	DAOU VENNEG.

Ar bacamant a dle beza great araog caout ar gazetenn.

ALIOU.

Ar scrijon a ve c'hoant da lacat er gazetenn d' dleer da adressi oll d'an Aotrou MORVAN, Beteg e Kemper.

Ar paeamanchou a dleer da adressi d'an Aotrou SALAUN, ebken. An abonnamant a guemerer e ti an Aotrou SALAUN, librer, ru Kereon, e Kemper.

KEMPER, 22 Even 1867.

An avel a leverer, a ra vad d'ar guez oc'h ho lacat da boutza griziu st'artoc'h ha douroc'h en douar. Ar brezhion a rer d'an ilis santel a ziskuez ive ato sclerroc'h ar virionez euz a gomzou Jesus-Christ pa lavare e lakea he ilis da ziazeza var ar mean, na ne alje morse doriou, da lavaret eo, oll nerz an ifern he discar. Peguement ne deo ket dihnet ar feiz e calon ar guir gristenien dre ar brezhion diveza-ma great d'an ilis? Guelit gant pebez larquentez e savont diner Sant Per evit sicour hon Tad Santel ar Pab en he izom! Guelit pebez ners-calon en dud iaouane-ze a guita ho bro evit mout da zifen ho zad, tad an oll gristenien, hag er re a ro ho danvez evit lacat ha dere' hel tud e servich Vikel Jesus-Christ! Peur oa bet gullet e Rom eun assamble ker caer evel an hini a dle beza en derveziou-ma? An dibab euz an eskibien; ar penou kenta euz an ilis catolic a bevar c'horn ar bed! Ha ne deo ket anat eun breac'h an Aotrou Doue o tere' hel ar ghal avelou a za. o tere' hel ar bed oll sioul ha didrouz evit ma c'hello he gannadet mont beteg an hini a zalc'h leac'h dezhan var an douar, evit diskuez he ilis skedusoc'h evit na d'eo bet gullet morse?

Dispac'herien an Itali o defe c'hoant da viret na ve caer gouelion miz even e Rom. Skigna a reont fals keleier o clase ober aoun da tod, o clase miret outho da vont d'ar gueur benn-ze euz ar bed. Mes petra zigouez? Nemet muioc'h aze a veleien, nemet muioc'h aze a gristenien a bep escopi, a bep bro, a ra ho fourehas, hag en em laca en hent araog ha varlerc'h an eskibien evit caout ive perz er gouel dispar-ze.

Caer a vezo, Doue a vouezo ato tenna ar mad euz an droug. Dispac'herien an Itali o deuz harluet calz eskibien, calz behien; o deus tolet calz menec'h er meaz euz ho c'hounec'hou. Petra eo deut ar re-ma da veza? Calz anezho so eat da brezeg ar feiz d'ar broion estren, so eat d'ar missionou eleac'h ma reont cant guech muioc'h a vad, eleac'h ma c'hounezont cant guech muioc'h

a eneou da Zoue evit n'o divije great ma vijent cliomet en ho bro.

Gullet a reomp brema Bro-Zaoz o tistrei d'ar relijion catolic. Bep sizun e elevomp hano euz a veur a hini distroet d'ar guir feiz, euz eun ilis pe eur chapel nevez bennag savet d'ar gristenien catolic. Hogueu piou en deus taolet en douar-ze an had a velomp hano sevel hag o tonguen frouez? Piou en deus lakat da d'ar hano eur sclerren euz ar virionez e creiz tenvalijen an euz? Piou en deus comanset disc'hrizenna an droug evit lacat ar mad en he leac'h? Piou nemet ar gristenien hag ar veleien hag ive tiadou christenien catolic bet ha haruet d'ar kroze epad ma e bet an dispac'h e Frans? Ar re-ma eo o deus dre ho skuier ha dre ho c'hentelio digor-troc'h er parc-ze a zo keal da gaout divezatoc'h eost mad enlia.

Ar pez a lavaran ama divar benn Bro-Zaoz, a dleer da lavaret ive divar benn an Alamagn hag ar broion all leac'h n'ema ket ar guir feiz, hag eleac'h ma voue roet diguemer da veleien Frans harluet gant an dispac'h.

Hag evelse an iliz a c'hoant d'alc'h mad eleac'h ma ve c'hoant d'he lacat da goll, hag a ra var gresc' dre an darvoudou dre bere e clase he enebourien he distrija.

Rom. — Dre ma tigouez Eskibien e Rom, e casser ar c'helou d' hon Tad Santel ar Pab; ar pez a garg he galon a levenez. Pemp prelat so c'argnet da zigumeret an Eskibien dre ma tigouezont. Pab tra so didrouz ha sioul er c'harteriou tost da gueur, ha ne deus na cholera na clervet all ebet dre eun, petra bennag ma falle da enebourien an ilis rei da gridi e ve.

PARIS. — Brema emaer o tiscar, evit ober eur ru ledan avel a rer e pep leac'h dre gueur, Chapel ar Verzerien, da lavaret eo chapel couent carmez, ar gouel-ze ker bradet dre an niver braz a veleien hag a re all a voue merzeriet eno en amzer an dispac'h. An brezhonien guez a voa eno a voue eun dervet hag a dispennet gant eur vanden bourrevion pe kigherien. En em den-

net oant evit an darnvuia er chapel eleac'h ma vouent lazet bem var vern. Ar c'horfou a voue casset ac'hano a garradon. Hoguen cridi a reat n'oant ket casset oll. Lavaret a reat e voa eno eur puns eleac'h ma voa bet stlapet lod anezho. Ar puns-ze ne vouiet ket abaoe pelec'h edo, rag goloet oa bet. Mes brema eo bet dizoloet. Cavet euz enha pemzeg corf ha triuguent. An hini a ioa var gorre ar re all oll, a greder eo corf Arc'hescop Arl. He anaout a rer dioc'h croguen he benn digoret gant eun taol sabren. Gouout a rer eo arc'hescop Arl a voue ar c'henta draillet gant ar vourvien, hag e voue dis-carez gant eun taol sabren divar he benn.

An hini en deus roet da anaout ar pez a voa tremenet eno en devez scrijus-ze, eo eur beleg hanvet an Aotrou Seguin. Hema en doa bet meur a daol sabren pe daol bouc'hag, hag a ioa bet douguet er c'hirri etouez ar re varo da lacat en douar. Eur vaonez o veza deut da zellet oc'h an enterramant trist-ze, a velaz eur c'horf hag a ioa buez enha c'hoaz, hag her c'hassas ganthi d'he zi eleac'h ma velleas dezhan ha ma teuas adarre d'ar icc'het, ha bevet en deus pell amzer goudeze.

Bourdel. — E costez Bourdel, e parrez Langon, ez eus bet, an eil a vis Mae, eur gouel caer en hono d'an Aotrou Beaulieu unan euz ar visionerien merzeriet e Coree er memes amzer gant an Aotrou n'Escop Daveluy, euz a Amiens, a behini on eus comzet. An Aotrou Beau-lieu a voa iouane flam; n'en doa nemet pemp bloas varnuguent. Azaleg he guenta bloavezion e teve gant ar c'hoant da vont da gas sclerijen ar feiz d'an dud gouez. Doue en doa roet dezhan an oll dalanchou rekiz evit kementse. Hoguen, araog ma zeaz en hent, e tigasas dezhan eur goal glenvet, hag e tennaz he vam euz ar bed-ma. A veac'h pare, an Aotrou Beaulieu a ziblas da vont d'ar Chorea, etouez enebourien an hano christen. Ne voue ket pell eno pa ellaz ar baiant cregui enha hag he lacat d'ar maro, goude beza great dezhan gouzaon kement tourmant a ell ijin ha counnar tud criz da ivanti. D'an 8 a vis Mae 1866 e c'honnezaz ar gurunen a verzerinti. D'ar gonel so bet e Langon n'oa hano ebet a ganv. Pephini a ioa fougue enha da veza bet anavezet an den iouane calouner-ze en doa dilezet pep tra evit silvidiguez he vreudeur, hag en doa roet he vuez ha scuillet he c'hoad evit lacat re all da gaout ar vuez eternal. G. M.

MERZERIEU AR JAPON.

(PEVARE PENNAD).

Er bloas 1599, roue Firango a falvezas dezhan ive distruja ar relijion gristen en he rouantelez. Carga a reaz he vap da enclasc ar gristenien ha d'ho lacat d'ar maro. Hema kenta preiz a gavaz, oue he bried he unan, a voa eur gristenez euz ar re vella. Merc'h oa da Sumitanda, kenta prins euz ar Japon a voa en em c'hreat christen, hag unan euz ar gannadet a voue casset d'hon Tad Santel ar Pap. Pa deuzaz eta an urs criz-ze, ar brinsez-

ma a lavaraz d'he fried ne zilesje biken he relijion, hag e voa guell ganthi mont da glasc he bouet evit heza evelse hiskinet abalamour d'an feiz. Hag evit guir en em dennaz e ti he breur o voa prins en Omura. Hoguen he fried he c'haric'cals. Pa vouezas pelec'h oa eal, ez eas d'he c'herc'h, hag e touas dezhi he lesje da heul he relijion evel ma carje. Etouez ar bopl, e' huc'h prins gant tud ho zi, hag ouspou c'huic'h cant christenia leaz anezho ho unan d'an harlu. Ar roue n'edo ket o c'hortos kementse, habascaat a reas dezhan, hag e lavaraz dezho distrei d'ho bro.

An pers-calou-ze eus ar gristenien, ha lidou divalo a voue er bloavez-ze etouez ar baiant a lakeaz eun niver bras da drei keiu d'an idolou. Bete deg mil ha triuguent paien en em c'hreas christen var eun dro. Daou roue, roue Fingo ha roue Mino a labouras mui evit missioner ebet da c'hounit an eneo-ze da Zone. Hoguen roue mad Fingo o veza bet lazec en eur vrezel, he rouantelez a goezaz etre daouarn eur roue paien, hag hema a fallas dezhan lacat ar gristenien da azeuli ar memes idolou gantha. Evel ma lavarent erenn ne rajent ket, e lakeas cregui e daou anezho a voa a lignez huel, Ian Minami ha Simon Taquenda. Ar vignonet o doa an daou gristen-ma etouez ar baiant a reas kement a eljont evit ho lacat da zenti oc'h ar roue, pe da viana da ober neuz da zenti. Ar pez a gavent iskiz oa gullet priejou an daou gristen ha mam unan anezho ar re guenta oc'h ho alia da zele her mad d'ar feiz. Lavaret a rejont kementse d'ar roue, hag ema a roaz urs dioc'h tu da gas an daou gristen da eur bourg a dost, hanvet Cunamoto, d'ho dibenna eno, ha da staga an teir maouez oc'h ar groas.

Kerkent ha ma teuas kelou euz an urs-ze, Minami ne c'hortozas ket ma teujet beteg enha, hag a ieas anezhan he unan da Cunamoto. Mont a reas ractal da di ar gouarnier. Hema a voa he vignon hag a reaz he c'hallout evit he c'hounit. He bidi a reas da leina gantha en esper dont abeun d'he douelli, hag o velet e chome ato, stard en he greden, her c'hassaz en eur gambr eleac'h ma lakeaz he zibenna. Ar c'hristen caloneg-ma a varvaz an eiz a vis kerzu 1602, d'an oad a bemp bloaz ha tregont.

Ar memes dervez, ar gouarnier a ieas da di Taquenda. Oc'h he velet, en em lakeas da vouela, ha Taquenda a deuz ive an daelou en he zoulagad. Chom a rejont eur pennad ep gallout comz an eil oc'h eguile. Var guementse e tigoezas mam Taquenda, hanvet Jannet er vadiziant.

— Itron, eme ar gouarnier, red eo din mont dioc'h tu da rei da c'honzout d'ar roue e pe zouch ema ho map. Va zicourit eta, me ho ped, d'he lacat da zenti oc'h ar prins.

— N'em eus netra da lavaret dezhan, eme ar vam gristen, nemet ne oufet ket prena re guer eun euruset hag a hado ato.

— Mes, ma na zent ket oc'h ar roue, o pezo ar c'hlae har da velet dibenna ho map!

— Plijet gant Doue, eme ar vam, ec'h elfen meski va goad gant he himil.

Ar gouarnier a zonjas neuze e tenje k'ntoc'h a' benn euz he vignon pa vije disparfiet dioc'h he vam. He gas

a reaz eta da di eur paien, hag eno e reaz he c'hallout evit he c'hounit. Hoguen poan gollit e voue dezhan. Neuze ar gouarnier a gasaz eun den evit he zibenna.

Taquenda a voa o c'hortos kementse, hag a recevaz ar c'hellou gant eur joa vraz. En em denna a reaz eur pennad da bidi. Neuze ez eas da gaout he vam hag he bried hanvet Agnez evit disclerit dezho an urz a ioa dent beteg enha. An diou gristen-ze caloneg-ze a voa en ho guele. Sevel a rejont dioc'h tu, hag ep' disk'iez an distera tam strafuil, en em lakejont da bourchas pep tra evit ar sacrificis. Ervez urz ar roue e' tliant beza var al leac'h pa vije dibennet Taquenda.

Pa voue pourchaset pep tra, Agnez a ieas da gaout he fried, en em lakeas d'an daoulin dirzhan, hag hier pedas da drouc'ha dezhi he bleo; « rag, emezhi, ma na vezan ket laket d'ar maro ganeoc'h, e fell din kuitat ar bed. » Taquenda n'en doa ket a c'hoant da ober kementse, mes he vam her pedas da zenti oc'h he bried, hag hier greas. Eun dijentil hag a voa bet kristen hag en doa goudeze diuac'het ar guir feiz, a deuas da di Taquenda var ar brud ez'ea da veza laket d'ar maro. Pa velas pe' guen eurus en em gaf eur guir gristen da rei he vuez evit Doue, parvelas Taquenda o vont d'ar maro evel da eun eured, e voue scoet er he galon; redek a reas da vriata ar merzer, hag e tistnoaz oc'h Doue.

Taquenda a emgarekeaz Doue euz ar c'hraz-ze a rea dezhan araog mervel. Goude beza pedet, briatet he vam hag he bried, roet gobr d'he zervicherien, e soublaz he benn dirag ar bourreo, ha dibennet e voue gant eun taol an nao a vis kerzu.

An diou Itron o devoe hers calon avoalc'h evit chom da zellet dibenna ar merzer, hag evit mont goudeze da zentim he benn ha da boker dezhan. Pedit a reant Doue, dre verit eur maro ker presius, da rei dezho ho unan ive ar c'hraz da ober ar sacrificis euz ho buez. Goudeze en em deujont ep ho c'hambr, hag e tremenjont an deiz o'ller beden, o c'houlou ar c'hraz da c'houzaon ar verzerinti. Dioc'h an noz e vouent sonzet o velet o' tont d'ho zi intanvez Miami, hanvet Madalen, gant eur buguel sepe eus vloaz hanvet Lois. Ar potrig-ze a voa map da eun braud da Vadaten. Er hag he fried o doa he guemeret evit hore broadur, rag n'o devoa ket a vugale.

Madalen a lavaraz, en eur zigotezout, d'an diou Itron Jannet hag Agnez, e tliant beza staguget ho zeir oc'h ar groas er mas-vezez hag ar potrig ive. Kementse a reas kement a blijadur dezho, ma na vouient ket penaus diskuez al levezon a voa d'ho c'halon, ha ma voant evel pa vijent eat er maro anezho ho unan o' trugarecat Doue hag o comz euz a c'hloar ar verzerinti. Loizig ive a zride he galon, hag eun dudi oa he glevet o lavaret pe guen euz eo ar re a seuil ho goad evit Jesus-Christ. G. M.

(Eun pennad all eun veac'h all.)

MISSION AN ERGUE-VRAZ.

Var dro eul leo hanter euz a Guemper, e tu ar sae-heol, ez euz eur barrez vraz ha pinvidic hanvet an

Ergue-Vraz. 2,255 den zo eun-hi. Euz an hent hono an a ya a Guemper d'a Rosporden, e veler an toud hag an ilis. Er barrez-se ez euz bet eur Mission gant meur bet, er pemzeg devez diveza euz miz Mae, abaoe an d'ar zec betec ar seiz-vann hagent. An Aotrou Lamark, person Sant-Caonnin, a oavegnet gant an Aotrou n'Escop d'ar rem ar Mission. Ouspenn an Aotrou Lamark, e oa c'hoas unnek belec diuac'het.

Sete ana penaus e comz euz ar mission-ze eun den difeiz, on eul d'ezha servit d'he vam goude beza distroet ous Doue.

Vam Mam guer

« Teir zizun zo n'em breuz ket roet deoc'h euz va c'he-
« dou: Abaoe, em lieuz gullet eal haou caer, traou a
« na zizonjil morse, a pa' timplen cant vloaz var an
« douar. Guela reol gant al laouenediguez, va mam
« guer, pa' lemot petra zo e' hoavezet gant ho map.
« Meur a vech o' peuz goufennet ar c'hraz-ze evitan,
« digant Doue.

« Digouezet e Kemper, ar demzec a vis mae, ez is
« d'a bourmen dre guer. A benn an noz em boa gullet
« kement tra gaer zo eno. Antronoz vintin, va zonz a
« oa mont d'a veit ar parrezion tro var dro; maez ne
« ouien d'a belleac'h mont d'a gilenti, pa' lavaraz unan
« d'in en eur c'hoazin: ke d'ar Mission d'an Ergue-
« Vraz. — D'ar Mission? — Ia d'ar Mission. — Petra
« eo an dra-ze, eur Mission? Eur vech denag eni boa
« elevet lavaret: el leac'h ma leac'h ez euz eur Mission;
« morse avad, n'em boa prizet goufen petra eo eur
« Mission. — Eur Mission, eme eguile, zo tremen eun
« nebent devezion o pidi Doue, o covis ar pec'hejou
« hag o silaon prezeguennou. — Ha me' d'oll da c'hoaz-
« zin ha lavaret a' bouez va' fenn, ar vefeyen ha me ne
« domp ket mignonet vraz, ha m'al marvan eud deiz,
« gant re govat, ne vo ket gant re govat pedennou, n'a
« re govat prezeguennou; neuz fors deomp ato, tremen
« va amzer a rin, ha neuze caout peadra goude d'a c'hoaz-
« zin d'ar vefeyen ha d'ober goab eus ho relijion: ha
« me er hent.

« Pa zigouezis e oal o' prezeg. An ilis a oa fenn, hag
« an oll a oa tro ous ar gador brezeg, digor gant ho
« dioucouarn ho diou hag ho daoulagad o' para var ar
« belec. Dres e prezegue a enep an dud diluz a vev
« evel pa na ve na Doue, ha draoul, hag a ra goab euz
« ar re ne reont ket evel ho. Santou a' fise oal o' ton-
« bilat var va chonk. Diskuez a reez pe guen diskiant
« int er bed-ma ha pe guer malheuruz e vint er bed-
« all. N'enz forz, va c'heir ar p'ous an or, e talc'hen
« huel va fenn, goueoude ne' die ket beza laouen an
« drem ac'hanon, n'em boa ket gallet c'hoazin. Goude
« m'a oa diskennet ar belec, e oa lavaret e oal o' vont
« da gana eur c'hantic. Ha me o' bouennaat, caout a rep
« d'in e oan o' vont d'a glevet eur vanden dud o' toual, o
« iudal, oc'h opal d'ann tan goual: evel-se e chomis
« sebezet oll, pa' glevis eur c'han caer meubet: ar
« merc'het dreist oll a gane biao. Goude beza bet eur
« reuziadic er maez, eun toll cloc'h hor galvaz adarre.

Racal an oll a savas en ho za hag a redas d'an ilis, ne vijent ket bet laouennoc'h na scanvoc'h o vont da eul leur-nevez. Me a yas d'a glask va lein, droug emilion o is va mintiovez.

« D'a eun heur a kard, e oan adarre en ilis. E oat gant ar chapelet : goazet ha merc'het e oa eur chapelet gantho en ho dorn, ha goude pep Ave Maria e loskent eur c'hremen d'a goueza. C'hoant em boa d'a c'hoarzin d'a guenta; mez an dud-se a bede ar Vere'hez ken calonec, ma ne oan ket evit muret d'a lavaret ennon va unan: an dud-ma n'int ket ken desket a me, mez furroc'h int evidon; ha criz braz eo calon ar Vere'hez, ma n'a vezont ket silaouet.

« Goude ar chapelet e ca displeguet an taolennou. C'hoarzin a sevel va diouskoas a rankis, oc'h ho gullet. Ret eo beza sot magu, a sojien, evit lacat traou ken iskis dirag daoulagad an dud. Ne velen varnezh nemet diaoulou divaloc'h an eil evit eguile, hag a bep seurt loenet udur. Setu aze, a lavaren ennon va unan gant cassoni, petra zesk ar veleyn d'an dud divar ar mæz. Eb dale e pignas eur belec er gador, eur voal hir ganthan. Lacat a ra he voal var an dolen guenta: setu aze, cmez-han, e pe seurt taill em a ene ar pec'her. Guelit ar pez zo en dianvez: ar miffouer: an den-ze zo atao o sojial en he c'henet, en traou brao; ne ra nemet en em farda ha clask plijout d'an dud; gnelit izelloc'h, ar sac'h-binnion, ar c'hartou, ar voutaill hag al leorion fall; Ne ra bemdez nemet bragal, dansal, c'hoari, eva ha leun leorion fall. Ne c'hoarzen ket mui. Sellit brema oc'h an diabarz: ne velit ket e crez ar galou-ze an diaoul, hag en dro d'ezhan seiz aneval lous, d'a lavaret eo, ar seiz pe-c'het marvel: an ourgouil, merket dre ar paou: an uzurerez, merket dre an tonssec gant eur zac'hat arc'hant; ar pec'het mezus, merket dre ar bouc'h lik; ar gourmandis, merket dre ar penmor'h; ar goarizi, merket dre an aer; ar vuapeguez, merket dre al leon, hag an diegui, merket dre ar velfeden. Guelit ar pec'her paour-ze var guele ar maro: ne velit ket var he vele ar maro, he gleze en he zorn, o vont d'her skei hag en dro d'ezhan an diaoulou o c'hoarzin goab, o tiskuel d'ezhan he oll bec'hejou tremenet, hag ar fore'h gantho en ho daou-ru, evit he dol en ifern digor dirag he zaoulagad. Evelse ive, ez eo spoutoumet oll, he zaoulagad a venn dont eus he benn. Guelint-te pelloc'h c'hoas, goude beza het barnet gant Doue, o tisken en ifern, selejet gant an diaoul; caer en d'eus clask tec'het, ne ket evit en em siframma euz a dre he ivinou; mont a renk ganthan. Setu aze petra c'hoarvezo ganoc'h, kristemen, ma o pens ar goañ heur o a vervel gant eur pec'het marvel ebken. An traou-ze a oa lavaret gant eur vouez crev, nerus, skilfruz, ne ket ebken divar bec an teod, mez a greis calon.

« Evelse an oll a zelle hag a silaoue piz; clevet e vi e eul logolen o vale d'e an ilis; va-unan, caer m'boa ne oan ket evit muret d'a stoui va len, d'a zonzal

ha d'a lavaret: « Setu aze penaos e tlefe: prezognant religion, neket ebken d'an dud divar ar mæz, mezuve d'ar your'hichen. « Ah! ma vije va mignoc'h am! » Re, hir e yon ma lavaren deoc'h ma mam guer; an oll draou gær am-bous gullet ha clevet epad an deo vez-se. Bemdez, so lavaret d'in, e veze ar guiz-se, d'ass den na deue d'a skruza. D'an tol, a c'huoc'h hour e veze an oll, en ilis, ha kon-a, veze e'huoc'h hour euz an noz, ne fuv'e den; ha gousconde calz a oa dion, leo euz ar bouz. Ne ket ebken epad eun devez e deuz gret ar vicher-ze, mez epad c'huoc'h dion, ha tu hag an oll a lavare en devez diveza; mad n'hoñ deuz ket santet an amzer o tremen, n'in garje beza o tout adarre er zizun a zeu.

« Evidon-me ne gouskis banne en noz varlerc'h; caout a re d'in gullet asao dirag va daoulagad an taolennou am-boa gullet, ha clevet eur vouez o lavaret d'in: setu aze penaos em a ene, setu aze penaos e varvi, setu aze petra vo gret d'id goude da varo. Caer em boa poania d'a gas ar zonzou, ze divar va zro, ha lavaret ne oa an traou-ze oll nemet gueyer ha gra-c'herez, atao e tistroent; hag, evit en em zizoher anez-ho, e chomis e Kemper d'an guener ha d'ar zadorn.

« Mez d'ar zul goude creis-deiz, e iz adarre d'evit em boa e thie beza eur brocession gær en eur chapel euz ar barrés, hanvet Kerdevot. Caout a re d'in en d' da viana, em bije cavet va zu d'ober goab euz ar redal lijion; evel meuz am-boa d'a veza kemeret aon rac'an diaoul hag an ifern; hag e felle d'in en em venji. Sul vui e vunte Doue var dor va c'halon, sul vut e felle d'in starda ar preñnal. Ha me, d'a Guerdévo, m'ar gouien Lavaret e oa d'in Kerdevot a oa unan euz ar chapelou caera euz ar vro. Ne oa ket lavaret a c'heyer ar chapelou caera euz ar vro. Ne oa ket lavaret a c'heyer ar chapelou caera euz ar vro.

« An hent d'a vont d'ezhi zo brao tre, nemet ar c'hard leo diveza, a zo fall braz. Mal'eo renca ar penñal hent-se; ar chapel a c'hoannese cals. Dirag ar chapel ez euz eun dachen vraz golloed a reñcajou guéz huil. Eno e vez ar staliou, ar c'hoariou, etc., deuz ar pardon. Daou bardon a vez e Kerdevot, eul pardon bihan hag eur pardon braz: ar pardon bihan a vez d'a zul ar C'harimodou; hag ar pardon braz d'an eil zul a viz guengolo. Ousp'en-ze e vez oferen-bred er chapel bep sul diveza ar miz ha bep gouel ar Vere'hez.

« Euz ar parrezioù tro var dro hag eus pelloc'h zoken, e teu tud d'ezhan. Euz a Guemper dreist-oll e ear dy a steyou. An Itron-Varia a Guerdévo zo brudet a bell. Calz burzudou a lavarer a ra. Setu ama unan hag a zo nevez c'hoarvezet. Gant eun den euz ar Ergue-Vraz em heus clevet an dra-ma:

« Eur plac'hic bihan, goude leza comzet mad epad daou pe dri bloaz, a denas d'a veza mud. He zud gla-c'haret oll, a hoarias epad m'ur a vlavez d'a glask pare d'ezhi, mont a rejout ganthi d'a gaout calz me-

« d'ingez; meuz deñ na helle he farda. O veler he helle an dud m'ur crev oñtous bure hag ar Vere'hez. « He c'has a rejout d'a bardon d'ar chapelou braf deta: atao e an homme ho merc'h mud'Erfin e l'aver-« jout dont ganthi ive d'ady Itron-Varia Kerdevot. He zad he digassaz. Var eur marc'h h'guler e dant o'haou.

« Anvead h'eu devoa gullet ar plac'hic an touz ma c'hoannese digant he zad: tad, emez eo touz, Kerdevot? An tad, souezet ma d'ha fadoc'h braz, a lavara-raz re e varc'h Itron-Varia, ma' reñca d'he he verc'h d'a breg. A baone ar Vere'he a gomz eouls a pep bini. Me h'hoñ ket unan d'a gred d'ar burzudou, a gousconde eo diez chom eb credi d'a nema; rac deiz ar pardon eo c'hoarvezet dirag eur Bubi tud. Ar veleyn o unan a fellaz d'ezho gullet ar plac'hic hag a raz d'ezhi comz dirag-ho: Ar plac'he-ze d'he maonez avoallac'h, a zo c'hoaz beuz dimezet eo en eur barrez e kichen; bep bloaz e teu d'a bardon Kerdevot, evit trugarecat ar Vere'hez. Ar marc'h a oa guezet var ar groaz, ha prenet gant an tad.

« Ar chapel e unan zo caer meur bit. Revez eo var ar mæz an ilizon parrez hag a ve ker caer hag hi; ker eouls, braz eo eul eun ilis. An touz zo ive huil ha bras, ha daou gloe'h caer ennan. An treustou hag al lamprusk nevez livet, zo eun dud ho gouelet; ne guffet ket, meuz, ar d'ini, en deuz lakeet ober hag an ilioù en deuz gret al labour-ze. Mez ar pez a labour, caera zo e Kerdevot, eo ar gorre-aoter. Setu en eun dra hag a zo ranket caout izigu hag amzer evit he ober. Setu en eun dra hag a dal mont de-velat. Bep em zoken en gullet evit goul petra eo evel-ze ive e teu tuit a bep bro da zellet ounthan.

« Aragonno aoter-ze, zo evel pa lavaren, un armel vraz d'ioñ stalaveni varnezh. Var ar zizun e vezi al c'hoaz e rank beza braz ar gouel. E un armel vraz-ze, pa vez digor, e veler c'huoc'h armelic vihan distalay, var diou renk, teir e pep renk. Er renk d'ao traou, e veler en armelic kenta, Guinivelz Jesus Christ: sant Joseph hag ar Vere'hez, ar c'braou hanter disto, hag er c'braou ar mabie Jesus etre eun enjen hag eun azen, hag er fin ar messaerien denvet. Eul arme-lic, e veler maro ar Vere'hez, hag an ebestel en dro dez-hi. En trede, e veler ar Vere'hez dougnet d'an douar en eun archet; an Ebestel eo a zong ar c'hort santel. Eun den o velet an archet o costezia, a dolaz he zorn evit he erpel hag e veler he zorn chomet stag oc'h an archet. Er rencat var gorre, e veler en arme-lic kenta, ar Vere'hez o vont da vennigen he foun, hag o kinnig d'ar belec braz dion durzunel, ervez ma oa goure he mennet gant al lezen. En eil, he gueler curmet gant an Dremdet-Santel. An Tad, ar Map, hag ar Speret-Santel a zalc'h ar gurunen; hag an Elet a zo telennou ha lirenou gantho. N'em heus ket dal-c'het a zon, mad petra zo er e huoc'hvet armelic, me-gav d'in eo ar Vere'hez ec'h harz troad ar groaz. E crez, var gorre tre, e veler an Itron-Varia a Guerde-

« vot azezet e map ganthi var he divreac'h, hag eur guinhen Elet an dro d'ezhi. « Setu ama, ervez zo lavaret d'in penaos eo het gret ha deut da Guerdévo ar gorre-aoter-ze. « Euz devez ar Vere'hez a en em ziskueza d'a eun den yaouank a oa o teski he vicher e l'eur c'huoc'h er coat hag a lavaras d'ezhan. Labour evid-oun-me, zo N'oun ker gouehec avoallac'h. Me d'a guelleno. An deñ yaouank a guemeras an lammoù coat chomet var lerc'h he vestr, ha d'ez an noz, goude coan ellec'h mont d'a gousket, ec'h en em laka da labourat. He vestr o velet goulou ganthan, a fellaz dezhan goul petra re. Chom a reas souezet o velet ar pez en doa gret. Ne ket ganec'h-me, emezhan, eo e peuz desket ober an traou caer-ze; eun an bennag goue-lic'oc'h evidon, en d'ez gret seol d'id, kendalc'h da labourat; me ive a fell d'in caout peiz en dra-gær a rez? Kemer coat hag amzer ar pez a gari. Pa oa peur e l'het al labour, ar Vere'hez a deuas adarre d'he gaout hag a lavaras d'ezhan: Mad, va buguel, ar gorre-aoter a oa neuze atao dre urz ar Vere'hez, lakel en eur vag; hag ar vag a oa losket da vont e unan el leac'h ma pliele d'a Zoue. Goude beza treuzet cals m'ur, ar vag a oa tolet var an aot ne ouzon e pellec'h. Cals tud a fellaz dezho cas gantho ar gorre-aoter, meuz den na helle, eun dra ha ne velen ket a vire ouñho. Abars ar fin e teuas an him a oa e reen parrez an Ergue-Vraz, ha racal e clevas eur vouez o lavaret d'ezhan: Kemer ar gorre-aoter-ze ha cas anezhan d'a chapel Kerdevot. An den-ze a zentaz hag en digassas ganthan. A baone em a chapel Kerdevot. « Ha gur eo kement-se? me ouzon dare. Setu eno da viana ar pez a lavarer en Ergue-Vraz hag er parrezioù tro var dro. Cals traou caer zo e hoas e chapel Kerdevot; re hir e ve comz anezho oll: ker eouls mal am heus d'a lavaret deoc'h, va mam guer, eur gur bennag var ar brocession; credi a raan gousconde, em bo gret calz pljadur deoc'h o lavaret penñ-da-ber kement am heus clevet var chapel Kerdevot. Gant a raou peguement e carit ar Vere'hez, ha peguement e plij deoc'h clevet comz euz ar burzudou a ra. Pa d'anizhi d'a c'houeza ive ar garantez-se e calon, ho map. « Ar veleyn a zigouezaz var dro teir heur nemet kad. E kirri banec e oant kristenen an Ergue-Vraz, me oa ket talvezet d'ezho e teue var ho troad ar veleyn a guemere kement a loañ evit ho c'helen hag o lacat var hent ar barados. D'a deñ heur e oa cañet gousperou, ha goude, an Aotrou Lamark, a bignas er gador hag a reas eur brezeguen euz ar re-gæra. Euz dra bennag a lavare d'in: ped ive an Itron-Varia a Kerdevot, meuz a muzelloù a chommas serret cloz, va daoulagad ebken a reas eur zel etreuzec eun-hi. A neuze, ar gassoni a enep ar religion a varvaz em c'halon; mez ne zanten c'hoas carantez ebet evit. Erfin e oa renket ar brocession; ar vugale a oa er penn kenta, var diou renk. Varlerc'h ar vugale, e teue ar merc'het ha var lerc'h tre ar voazet var beder renk,

« diou renk a bep tu d'an hent. E creis e oa c'haec'h
 « baniel, eis groaz, patrom ar Ver'hez douguet gant
 « plac'het yaouank guisket e guen, hag ar velezen,
 « Tri belec a oa carguet da gana : unan er penn, eun all
 « e creis hag an trede el lost. Hag ar bobl oll a ziscane
 « meuleudion an Aotrou Douc ha re ar Ver'hez, a
 « rede evel pa lavarfen euz an cil penna d'eguite euz ar
 « brocession, hag a dreguerne er guis-se penna d'a-benn
 « an hent dre ar c'haerion, tro-var-dro : ar re ne ouient
 « ket ena, a lavare ho chapelet pe alenne en ho leor.
 « Den na lavare gic, den na zelle en dro d'ezhan ;
 « an holl a oa gand Jesus-Christ hag he vam ar Ver'hez.
 « Biscoas n'em boa guelek kement all ! Bete vrema,
 « me gave d'in eur brocession a oa eur bourmenaden,
 « a ree ar vele en gant ho c'haerion, ho banielou,
 « ho dillad ilis caëra, evit guelek ha beza gae et ; eun dra
 « eo eur guer, a zeer d'a zellet outhan er preceziou, hag
 « en dorjoñ, var ar c'haerion hag er c'haer-henehou.
 « Brema e velan eur brocession zo douguen ar c'haerion,
 « ar banielou, patromou ar saent hag ar Ver'hez evit
 « pedi, trugarecaat ha meuli ar saent, ar Ver'hez, an
 « Aotrou Douc : brema ec'h hellan lavaret em beus
 « guelek eur brocession kristen, santel, eur gouir
 « brocession.

« Doug ar zizun, e oa, evel pa lavarfen gourin etre
 « an Aotrou Douc hag an diaoul e guelek va c'halon.
 « Douc a lavare din : va map, digor d'in dor d'a ene ;
 « hag an diaoul a iude d'in : preun anizhi outhan.
 « Eur vonez a lavare : ke d'ober d'a vision ; hag eun all
 « a lavare : gant ar vez : mont d'a govez, da lavaret
 « chapeledou, d'a silaou grac'herez ; petra lavaro d'ha
 « vignonet ? Hag e chommen e Kemper.

« Gouscoude d'ar Zal e zis adarre. An devez-se e tliet
 « benniguen croaz ar mission. D'an hent merket, e
 « zojomp oll e procession betec ar groaz : eur groaz
 « gaer meurbet, savet so lavaret din, evit eur Jubile
 « braz bet er barrez, brema z'euz var dro pevarzec vloaz.
 « Goude beza benniguet ar groaz, an Aotrou Lemark
 « a biguas var an diri hag a reas ac'hano eur brezeguen :
 « pebes monez ! pebes comzou ! ha dreist holl pebes
 « c'halon ! Ezel-ze a gav diun e tlie prezeg an Tad Maner
 « hag an Tad Mikel Le Nobletz. Me garje, scriva deoc'h
 « va mam guer, ar breguen gaer-ze, abaque ar guer
 « kenta betec an diveza. Setu ama d'a viana e ber
 « gomzou, ar pezh an heus sonj : dont a raan d'a brezeg
 « deoc'h Jesus-Christ stagous ar groaz : setu ar pezh
 « douz prezeguet an ebestel guechal ; setu ar pezh
 « douz prezeguet evit ar vech, ar pabet, van eskibien,
 « ar velezen abaque an ebestel bete vrema ; setu ar pezh
 « an deus prezeguet ama ahaoue ma maomp : Jesus-
 « Christ stag ouz ar groaz, setu ive ar brezeguen a fell
 « deomp loskel ganeoc'h, arae mont kuit, Ennez a
 « zesco deoc'h liguelloc'h evit n'houn dens gallet en oher,
 « oll gouirionezou ar religion ; ennez a sigasso sonch
 « deoc'h euz ho mission. Meur a vec'h, marize, o pens
 « graet goab euz Jesus-Christ stagous ar groaz, ken
 « dre ho comzou, ken dre hoc'h oberou ; ret eo hirio

« dirag an ee hag an douar, anzaio o peus-keuz ha touet
 « ne creot mui. (Savit ho taouarn el laë, hag an holl
 « daouarn a savas evel eun ten el laë. A viziken piau
 « a fell deoc'h heulia ? — Jesus-Christ a lavaraz ar bobl
 « oll a vonez huel. — Piau a fell deoc'h respecti ? —
 « Jesus-Christ a lavaraz an oll a nevez ha gant eur vonez
 « crenoc'h ? A viziken pa vo dirazoc'h an diaoul ha
 « Jesus-Christ, pehini a guemeroc'h evit hoc'h Aotrou ?
 « — Jesus-Christ a lavaraz an oll evit an trede gae'h,
 « ken a dreguerne ar veret hag ar vorc'h : hag an eccleo
 « a lavare dre ar barrez : Jesus-Christ, Jesus-Christ,
 « Jesus-Christ. Ah ! va mam guer, hag een zo caër
 « guelek eur barrez oll e sevel he dorn d'a douc heulia,
 « respecti a kemeret Jesus-Christ evit he Aotrou !
 « Ho map a oa pell a oa stonet he benn, an daelou o
 « tiriou pa eus he zaoulagad. Ne oa mui evit sevel
 « he zorn na lavaret eur gomz gant he deot : mez he
 « galon a oa a unan gant calonon an oll : hag a lavare
 « me a henlio, me a respecto, me a guemero a viziken
 « Jesus-Christ evit va Aotrou. Douc en doa trec'het
 « efin an diaoul.

« Evelse ive, e tistrois rac dal da Guemper, hag a benn
 « an nos e oan bet o taouina e bars treid eur belec.
 « Diguemeret e oan ganthan evel ar map a voal zispign
 « gant he dad. El leac'h rebecherez a oa d'fret din
 « ne gleviz nemet comzou lenn a denere diguez.

« Antronoz e oan adarre m'istin mad en Ergue-Vraz,
 « va c'halon a oa scanv ha laouen : ar peoc'h a oa emuli.
 « En devez-ze e oa evel pa lavarfen mission ar re varo,
 « Pebez mintivez evit eneo ar pugator ! Ouspenn mil
 « gommanion evit an anaon ! D'a zeis-heur an ilis a oa
 « leun couch. A veac'h e oa chomet unan da zioval
 « pep ty. Ar servich hag an oferen capet, e zejor d'ar
 « veret e procession, pehini eun ascorn en he zorn.
 « Eis-devez arae, em bize graet goab euz ar hobl-ze ;
 « mez va c'halon a oa cheuchet. Eur bez douc ha ledan
 « a oa toulllet evit diguemeret an eskern. En dro d'an
 « toull-ze, e oamp renket. An Aotrou Marzin, person
 « Brijec, a hignas neuze var ar bern douar tennet euz
 « ar bez, hag ac'hano e prezegas deomp epad eun hent.
 « Den n'a oa inoet hag an darn vuya a scuille daelou.
 « C'haec'h vloaz ha triguent en deus zo lavaret din,
 « tremen tregont vloaz so eme e redet ar missionon,
 « ha gouscoude, he vonez, he galon, he garantez evit
 « silvidiguet an eneo ne gossout tam. Goude beza
 « lavaret pehini eur beden var bez, he dud, an oll zo
 « deut d'ar guer sioul, ha laouen o sonjal en traou caër
 « o doa guelek ha clevet. Cals am heus rayet var an
 « hent, pa oan o tistrei va unan d'a Guemper, hag e
 « lavarent : biscoas n'houn doa guelek na clevet traou
 « ker caër, eun dudi a oa beza en ilis an Ergue-Vraz
 « epad an diou zizun tremenet. Mil bepuos d'an
 « Aotrou Person, en deus bet ar vadelez d'a zigas deomp
 « ar mission santel ma ; mil bepuos d'ar velezen, ben-
 « nignet o deus labouret kement var hon tro : biviken
 « n'ho ancomac'hamp en hor pedenno. Ha me a lavare
 « evelthio. Ha c'houi, va mam guer, p'a po lennet al

« lizer-ma, lavarit evel tad ar map a voal zispign :
 « va map a oa collet, ha setu eun rayet, marc'ha
 « setu en beo adarre. A viziken he belemoc'h a zavo
 « gant va re betec an Enn ; a viziken ez aimp hon daou
 « d'a zaoulina ouz an dol zantel, evit dibri bara aneflet. »

« **Hano ar Zent evit ar Sizun-ma.**
 « **DILLUN 24. EVEN.** — Gouirvelez Sant Jan Vadezour.
 « **DIMEURS 25.** — Sant Gouilou, abate.
 « **DIMERC HER 26.** — Sant Jan ha Sant Paul, merzerien.
 « **DIZIOW 27.** — Eüsvef ar Zaeramanit.
 « **DIRGUENER 28.** — Sant Leon, Pap.
 « **DISSADORN 29.** — Iun, Sant Per ha Sant Paul, Ebestel.
 « **DISSOL 30.** — Trede sul goude ar Pantecost. Gouel
 « ar Galon Sacr a Jesus.

« **An Abostol hirio :**
 « Me ho menlo, o va Douc, abalarour goude ma zoc'h
 « bet buhaneket ouzin ; ho pahanegez so distroet, hag
 « oc'h eus va frealzet. (c'housolet.) Setu em euz eun Douc
 « evit salver ; gant fizians e valein ha n'em bezo ket aoun ;
 « rag Douc eo va nerz ha va meuleudi, ha deut eo da veza
 « va zilvidiguet.
 « Gant levezet e tennot douc euz a feunteunion hor zal-
 « ver. Hag e leverot en deis-ze : Meulit Douc, ha galvit he
 « hano d'ho sicour ; ho pet sonch eo huel meurbet he ha-
 « no. C'ant meuleudi d'an Aotrou, rag traou burzuduz en
 « deus graet ; brudh kementse dre ar bed oll. Bezit fougue
 « enhoc'h, ha meulit-hen ; Sion, leac'h choazet gantha da
 « jom, rag braz eo en ho creiz Sant Israel.

« **Tennet euz ar profet Isai. XII. G. M.**
 « Penaoz e tleer skrifa : gan pe gant (avec) ; d'om, d'om
 « pe d'omp, d'omp (à nous), deom pe deomp (allous),
 « lavarom, pe lavaromp (disons), etc. ?
 « **Ar pennad-ma na zell nemed ouz an dud deshet pe**
 « **gouizyeg, d. l. e. nemed ouz ar re a voar, ouspenn ar**
 « **brezoneg, ar galleg ha yezou all.**
 « **Per** ha Yann, bet ho-daou war ar studi, kre war ar
 « galleg, war al latin, war ar greg (a zanje d'ezo da viha-
 « dia) kre dreist oll war ar brezoneg tost kemment hag
 « eun hanter groac'h koz pep ini anezo, ha gan an dra-ze
 « choaz skrifaouryen ho-daou, mar plij gan-oc'h, a voa
 « en 'em gavet, eun deiz da gaözeal war an doare da
 « skrifa mad ar brezoneg. Ha Per, o kemmer ar gomz, a
 « lavaraz da Yann : « Kleo, Yann : te a zo eun iskiz a zen !
 « Te ne fall d'it ober netra evel ar re-all ! »
 « Yann : « Ha petra ez peuz c'hoant da lavaret, Per ? »
 « Per : « En da werzyou te a skrif gan eb t, ha deom,
 « lavarom, redom, eb p. »
 « Yann : « Hag e kavez abeg e kemment-se ? »
 « Per : « An oll a gondaon ac'hannout. »
 « Yann : « Hag e pedez ac'hannou. »
 « Per : « E pedan ac'hannout, evid ma rai peoc'h ar
 « re-all, da skrifa gant, deomp, lavaromp ; »
 « Yann : « Ma Per, evid ober plijadur d'a hag evid la-

« kaat da devel ar re-all, me a ya da zenti ouz-ont. Mes
 « divoall n'azpezo keuz ! »
 « **Per** : « Te a lavar hag a skrifa evel-se, hag a zall ho
 « mar kerez, da skrifa evel-se. Mes me a skrifa evel-se :
 « gan-t-ha, gan-t-hi, gan-t-ho. Skrifet en doare-ze, gan-
 « t-ha, gan-t-hi, gan-t-ho a lavar d'it skler, penaoz lan d'en
 « 'em gav aze e kreiz, a zo ar pezh a anver e galleg eun
 « euphonik. E brezoneg me a aulle ar sont lizerennou-ze
 « lizerennou blod, o veza ma teouont da vloda, da zousaat
 « an tel etre daou e her, pere a dle beza stagnet an cil ouz
 « e-gile. Ar brezoneg a gar kalz al lizerennou blod hag a
 « ra eun implij braz anezo. Gwel ar skugreunna-ma :
 « **Evel-d-oun pe evel-d-on, evel-d-out, evel-t-ha, evel-t-hi,**
 « **evel-d-om, evel-d-oc'h, evel-t-ho. Echiz-t-oun pe echiz-t-**
 « **on, echiz-t-out, echiz-t-ha, echiz-t-hi, echiz-t-om,**
 « **echiz-t-oc'h, echiz-t-ho. Mar-d-euz, man-z-euz, ome**
 « **Leoniz, mar-g-euz, eme Kerneviz, man-h-euz, eme**
 « **Sant-Briegiz. War-n-oun, war-n-out, war-n-ha, pe war-**
 « **n-eha, war-n-hi pe war-n-ehi, war-n-om, war-n-oh,**
 « **war-n-ho pe war-n-eho. War-n-ugent, war-n-ugent-ha,**
 « **Hogen, ha te a stago ivez an oll lizerennou blod, ze**
 « **ouz ar geryou a zo en ho rad hag a skrifa : Echal, evel,**
 « **echiz, mund, marz, mang, mach, wam ?** Pe d'it ar
 « geryou a zo en ho goude hag a serit : **Dian, dion, dion,**
 « **thd, thd, dom, doch, tho, toum, ton, tout, tout, ton,**
 « **trid, os, ist, vosa, d'ad, ad, as, nos, nos, ad, os, b**

« **Per** : « Koulskoude te a lavar gantha, ganthi, gantho.
 « A-ze e lakeez t. »
 « Yann : « Te a lavar hag a skrifa evel-se, hag a zall ho
 « mar kerez, da skrifa evel-se. Mes me a skrifa evel-se :
 « gan-t-ha, gan-t-hi, gan-t-ho. Skrifet en doare-ze, gan-
 « t-ha, gan-t-hi, gan-t-ho a lavar d'it skler, penaoz lan d'en
 « 'em gav aze e kreiz, a zo ar pezh a anver e galleg eun
 « euphonik. E brezoneg me a aulle ar sont lizerennou-ze
 « lizerennou blod, o veza ma teouont da vloda, da zousaat
 « an tel etre daou e her, pere a dle beza stagnet an cil ouz
 « e-gile. Ar brezoneg a gar kalz al lizerennou blod hag a
 « ra eun implij braz anezo. Gwel ar skugreunna-ma :
 « **Evel-d-oun pe evel-d-on, evel-d-out, evel-t-ha, evel-t-hi,**
 « **evel-d-om, evel-d-oc'h, evel-t-ho. Echiz-t-oun pe echiz-t-**
 « **on, echiz-t-out, echiz-t-ha, echiz-t-hi, echiz-t-om,**
 « **echiz-t-oc'h, echiz-t-ho. Mar-d-euz, man-z-euz, ome**
 « **Leoniz, mar-g-euz, eme Kerneviz, man-h-euz, eme**
 « **Sant-Briegiz. War-n-oun, war-n-out, war-n-ha, pe war-**
 « **n-eha, war-n-hi pe war-n-ehi, war-n-om, war-n-oh,**
 « **war-n-ho pe war-n-eho. War-n-ugent, war-n-ugent-ha,**
 « **Hogen, ha te a stago ivez an oll lizerennou blod, ze**
 « **ouz ar geryou a zo en ho rad hag a skrifa : Echal, evel,**
 « **echiz, mund, marz, mang, mach, wam ?** Pe d'it ar
 « geryou a zo en ho goude hag a serit : **Dian, dion, dion,**
 « **thd, thd, dom, doch, tho, toum, ton, tout, tout, ton,**
 « **trid, os, ist, vosa, d'ad, ad, as, nos, nos, ad, os, b**

deuz, zeuz, geuz, heuz, noun, nout, nom, noc'h, nugent? Pebez babel nevez a vez se!

« Ia, dispartiom al liz-erennou blod euz ar geryou, pa na reont ket lodenn e gwiryonez euz ar re-ma, dre ar pezh a anffenn stagellig (trait d'union). E galleg e reer evelse (a-t-il), ha se a zo mad. Perâg ne raffem-ni ket e brezoneg ar pezh a zo mad e galleg? Nann, n'ed eo ket a-voalc'h skrifa evid ar skoarn, evel ma c'houlenn ar skoarn, e tleer ivez skrifa evid an daou-lagad. Morse ne vezim re skler en on doare da skrifa ar brezoneg. »

« Lavaret em beuz d'it Per, penâoz ar c'hrizyenn (l'etymologie) ne c'houlenn ket kennebeud eun t e gan. Gan, evid ar c'hrizyenn, a zo ar memez gan kem ha ken (kem-meska : meska gan, ken-ober : ober gan); ar memez gan cum com con al latined. Hogen, er re-ze n'ez euz ket t, perâg e fall d'it e vez e gan? »

« Ar c'hemriz, or breudeur a Vro-C'hall e Bro-Zaôz, 'o deuz can ha gan (avec) hag a skrif anezo ivez eb t : can baub ddy'n (gan peb den); gan ei holl greaduriaid (gan he oll grouaduryen). »

« Lennc'hoaz barzonegou ar barzed a Vreiz-Veur euz ar c'hoac'hved kantved, lakeet e goulou gan an Aotrou La Villemarqué, hag e kavi enno atao gan eb t : E bore gan sav e deiz (Euz ar heur gan sav an deiz. » — Koulscoude, evid na pas da c'hlacl'hari re, e lavarinn d'it e kaver ivez, ervez Zeuss, el leoryou brezoneg koz kunt, gant ha gans (avec). Ni welo se divezatoc'h. »

Y.-K. KERSALE, beleg ar Zalet.

KELEIER.

Skrifa a rer deomp euz a Bont-Croas :

Beleien canton Pont-Croas, ken ar re so e carg ken ar re ne m'aint ket, o deus savet pemp cant tringuent lur evit lacat eur zonav e servich hon Tad Santel ar Pap.

Beleien canton Kemperle o deus savet pemp cant lur evit ar memes tra.

Beleien canton Pont'Nabat o deus savet pemp cant lur evit lacat eur zouav e servich hon tad santel ar Pap.

Eur beleg euz ar memes canton en deus roet he unan pemp cant lur all.

An Aotrou Brignou, vikel e Rosporden, so hanvet vikel e Audiern.

An Aotrou Madec, vikel e Goulien, so hanvet vikel e Rosporden.

En dervezioù tremenet, e lavaret ez oa e'huac'h cant mil den diaveaz e Paris : ha da nebeuta cant mil bemdez o sellet oc'h an exposition.

Ar c'huac'h a vis gouere, retred brezoneg evit ar merc'hed e Lesneven.

An Aotrou'n Escopa ia en dervezioù-ma da Rom. Mont a ra, eur vech c'hoaz, evel en doa lavaret dissul ar Pantecost euz a gadar e gatedral, evit goulenn bennoz ar Pap da oll dud he escopti, hag evit rei dezhan da anaout pegement ez eo caret ama, ha pe guer stag eo ar c'halou en escopti-ma oc'h cador Sant Per.

Al lezvarn (Cour d'Assises) a zigoro e Kemper an eiz a vis gouere. E penn al lezvarn e vezo an Aotrou Dupuy alier e lezvarn Roazon, hag evit eil en devezo an Aotrouez Camenen ha Claret. Setu ama hanoiou ar jurect.

An Aotrouez :

- Julian Larvor, euz a Vrest. August Guillier Dumarquay, euz a Guemper. Guillou ar C'hous, euz a Verrien. Herry de Lestang du Rusquec, euz a Sibiril. Eozen Martin, euz a Gollorec. Alexandr Charles Bertrand, euz a Vrest. Jul Nicol, euz a Blougastel Daoulas. Ian Fransez Herry, euz a sant Salver. Lois Despinoy, euz a Landerne. Adolf Hemery, euz a Vrest. Theodor Mari ar Bras, euz a Vrest. Hervé Grall, euz a Sant Thegouneec. Jakez Abgrall, euz a Lampaul. Edouard Fenigan, euz a Gastellin. Ian Loiz ar Goff, euz a Bont Croas. Fransez Mari Denouel, euz a Vrest. Per Deloheau, euz a Vrest. Lois Baudry, euz a Vrest. Adolf Le Jeune, euz a Vrest. Herry de Rodellec, euz a Gastel Paul. Faustin Duigon, euz a Bont Aven. Guillou Jade, euz a Audiern. Noel Laurans Lagie, euz a Vrest. Ian Per Leost, euz a Blouziry. Fransez Mari Queinec, euz a Landiviziau. Ian-Olier Lavalou, euz a Blouziry. Jul Glozean, euz a Bont'n-Abat. Ian-Mari Le Jeune, euz a Sibiril. August Le Jeune, euz a Vrest. Armand Chauvel, euz a Gastellin. Gabriel Kerboul, euz a Lochbrevaler. Ian Coulogner, euz a Blouvoern. Ian Mari Daphnie, euz a Blouvoern. Ian Guichaoua, euz a Boul'dreuzic. Stanislas Lidée, euz a Blougastel Sant Germen. Armand Godebert, euz a Vrest.

Evit dele'her leac'h ar re a vanefe :

An Aotrouez Doudet, Desrués, Guillou ha Charuel, ho fevar euz a Guemper. G. M.

PRIZ AN EP.

Table with 2 columns: KEMPER. — 15 Even. and PONT'NABAT — 15 Even. listing prices for various items like Guinis, Segal, Eiz, Ed-du, Kerc'h, and Avalou-douar.

Ar Gerant: AR. DE KERANGAL.

Kemper, moulet gand Ar. de Kersale, Moullan an Escopti.

FEIZ HA BREIZ.

KELOU A BEP BRO, HA KENTELIOU VAR BEP TRA.

DIGASSET BER-SUL.

Da guement Christen a goms ar brezonec.

Eun Abonnamant d'ar Gazeten a goust :

- Evit eur bloas... DAOU SCOÛET. Evit c'huac'h miz... EUR SCOÛET. Evit tri miz... C'HUAC'H BEAN. Eur gazeten ebken... DAOU VENNEG. Ar baemant a dle beza great araog caout ar gazeten.

KEMPER, 29 Even 1867.

Var an douar ez euz daou rum dud ha ne zontont nemet da zestum danvez, da vernia madou var vadou. Ne deuz ket, a leverer, par d'ar iuzevien evit destum aour hag arc'hant, evit lacat aour hag arc'hant da vont var gresc en eun doare a allet da lavaret burzudus pantele ma c'houzer penauz en em guemeront evit ho lacat da greski. Kaout a rer ive gouscoude re all, tud engravet hag a guemer skuer dioutho, a voar ive serabat ha rastellat a ziou hag a gleiz, hag a deu ive abenn da jench en eun doare bennag guenneien e peziou aour ha liorzouigou e parkeier bras. Pa na glasker nemet eun dra ha pa boanier avoalc'h e c'heller caout fizians da zont abenn anezhan. Gouscoude ama meur a hini a bac sonezen; ho oll ijin hag ho oll finessaou a vez avechou ber. Bez'ez euz avad eur rum all a zestumerien ha ne vancont morse d'ho zaol. Ar re-ma a denn ato leve divar leve, hag a receo ato da nebenta cant evit unan. Etre ar re-ma hag ar rumou kenta a zestumerien ma em eus comzet anezho ez eus kement a guem evel so etre tud goueziec ha bugale o teski ho lizerennou. Ar re-ma ne c'houlennont nag ho zra, nag al leve divarnezhan bete fin ho buez, hag evelse e verniout tra var dra, leve var leve beteg ho dervez diveza, hag evel m'ema ho danvez etre daouarn eur paer mad ha leal, ar paer-ze ne vanc morse da renta beteg an diner diveza kement so dlet dezho. Ouspenn so, ar paer-ze zoken so ker mad ha ker jurdic, ma ro dezho da c'hortos, var ar marc'had, ep boule'ha nag ho zra nag al leve divarnezhan, kement so red dezho da gaout hed ho buez.

Ha piou eo an destumerien eurus-ze? a leverot-hu. Sellit; guelet a rit-hu an den iaouane-hont o vont en hent, eur vaz en he zorn, eur grucifi var he beultrin, hag eul levr d'ndan he gazel? Eun destumer tenzouioù eo. Mont a ra en eur vro a bell da brezeg ar Feiz d'an dud divadez, hag en deus sonch da gaout, digant ar paer bras, leve divar guement en deus dilezet en he vro, leve divar guement

ALIQU. Ar scrijou a ve c'hoant da lacat er gazeten a dleer da adressi oll d'an Aotrou MORVAN, Beleg e Kemper. Ar paemanchou a dleer da adressi d'an Aotrou SARRAN, ebken. An abonnamant a guemerer e li an Aotrou SARRAN, liber, ru Kereon, e Kemper.

camec a ra evit mont en eur vro estren, leve divar guement ene a allot gouet da Zone, leve divar ar vad a rai an dud-ze en devezo kelenet, leve zoken divar ar vad en devezo clasket ober ep beza dent abennit. Guelet a rit, nebeut a vobavezioù a vezo an den iaouane-ze en devezo eun tenzor ha ne vezo ket bihan; ha c'hoas mar guelle lacat var gorre eur grucifi aour, ar grucifi ha veze rintir, en devezo izom a ziou meur a bell varc'had hag evelse d'he heul; rag n'en deus ket a zouch da lezer he denzor var he lerc'h paer euz ar bed ma evel ma ra ar scraberien aour hag arc'hant, hag evelse e sonch c'hoas muioc'h enha he unan evit na ra uzulierien an douar.

Petra glasc ar plac'h iaouane-ze o velit o kuitet he dillad caer evit guisca eur zac dister ha stouhenneg, o teleur a gostez he zantelez evit golo he leun gant eur voal-zu? Hounnez so ive eun destumerez tenzouioù. Fallout a ra ive dezhi tenna leve divar ar braontezioù e deus dilezet, divar an oll dud elao ma he kemeret soursi anezho, divar ar vugale a ziou da zavel ha da bere e rai anaout Doue, ha ma e hounesse he maro he unan o vont var dro ar re glan, e deuz esperit vezo deg guech brassoc'h he zenzor.

Petra glasc al labourer-ze a velit o staga ker ebdeg d'he labour, a zo ker reglet da guinnig he bean hag he labour da Zone, a hoagn kement da guelen ha da zibreren mad he vugale, a so ker mad d'ar paour ma ro dezhan an tam euz he zorn? Hennez so c'hoaz eun engravet ha ne glasc nemet destum evithan he unan. Fallout a ra dezhan tenna leve divar he gamejou, divar guement tam labour a ra, divar guement berad c'hoaz a goez dioc'h he dal, divar guement kentel ha skuer vad a ro d'he vugale, divar guement aluzen a ro d'ar paour. Seti ar pezh a c'houlenn ha guelet a rit, ar paer bras a roio dezhan he c'hoant.

Guelet a rit eta ec'h aller beza engravet hag engravet braz, ec'h aller destum tenzouioù ha gouzout an dro da zestum ep caout ar galon stag oc'h madou an douar.

Caout a rer er bed-ma tud ha ne rentont da Zoue dever ebet, ne heuilhont relijion ebet. Badezet int bet ha n'o deus ken guir da dremen evit christenien nemet ar vadi- ziant-ze bet roet dezho pa n'o devoa ket c'hoaz ho ana- oudeguez. N'ho gueler morse o viret nieun a lezennou an Ilis, morse o lavaret eur beden, nan zoken oc'h o- ber sin ar groas. Fae zoken e ve gantho diskuez e guiz ebet ez int christen. Hoguen bez'ez euz eur vestrez scol hag a voar digas da zouch d'ar re-ma euz a Zoue evitho da zoujal nebeut enha er mare all; hag ar vestrez scol- ze eo ar maro. Ne ked red dezhi en em ziskuez; avoalc'h eo dezhi digas he skeud; hag an dud faeus-ze a gren, a scrij, hag a deu da zouch dezho ez euz eur mestr aziou- tho.

Lenn a rean en derveziou-ma ez oa en dez-all eun den a reng huel, eun den ha n'en deuz nemeur a Feiz, ha n'en em laca nemeur e poan da viret lezen Doue nag hini an Ilis, hag a falvezas dezhan mont da veachi en ear en eur ballon (eur vell). En em glevet oa gant perc'hien ar vell, hag en doa digasset gantha eun nebeut mignonet evit beza testou euz ar veach a felle dezhan da ober. Pa guitear an douar evelse en eur vell, ec'h ouzeur penauz e saver mes ne ouzeur ket penauz e tiskenner. Evelse va den pa oa c'hoezet ar vell ha pa gomansas sevel etrezeg ar c'hormoul, a jenchas liou, a grogas cremen enhan, hag a reaz, ep he zoujal, sin ar groas devot braz. Ne allas ket miret da zoujal ec'h alle beza oc'h ober he veach diyeza, hag e teuas da zouch dezhan euz he groner. He vignonet a velas kementse, ha lod anezho a c'hoarze, rag n'oa ket boas da lacat alies sin ar c'hristen en he guerc'hien. Ah! p'en em gal an den var var da goll he vuez, var zouar pe var vor, nenze e teu da zouch dezhan euz ar vuez all, ha peguen difeiz bennag ma ve bet bete neuze, eo red dezhan anzaou peguen dister eo he unan ha peguement a izom en deuz euz a zicour eun all gal- loudusoc'h evithan!

E Rom, pep tra a gomz euz a Sant Per. Kear Rom, evel a ouzeur, so savet var seis torguen pe seis tuchen; hoguen var bep hini anezho, pe e troad pep hini anezho e caver eun dra bennag hag a zigas da zouch eo bet Sant Per o chom el leac'h-ze pe en deus labouret eno.

Var dorguen ar Vatican e veler he vez. Ar Pap Ana- clet a lakeas sevel da guenta var ar bez-ze eur chapelic, ha goude Constantin a zavaz eno eun iliz ar gaera. Var dorguen ar Janieul e caver eun ilizic eleac'h ma voue staguat Sant Per oc'h ar groas. E troad torguen ar C'ha- pitol ema ar prizon eleac'h ma voue dalc'het an ab- bostol meur a viz, hag ar prizon-ze so great eun iliz anez- han. Guelet a rer eno eur feunteun. Sant Per a lakeaz an eienou-ze da zével euz an douar evit caout dour da vadezi nao baien ha daouguent. Er Marc hallac'h pe en daehen varc'had e veler eur mean var behini e taou- linaz ive an abostol evit goulou eus Doue discar Simon ar soreer. Roudou pennou he zaoulin so chomet anat var ar mean-ze. E troad torguen Viminal ema palez Sant Pru- dens, pe hini a lojas Sant Per en he di pa deuas da Rom. E Santez Mari an hent ledan ez euz eur c'haou pe eun toul

dindan an douar eleac'h ma en deuz an abostol oferennet ha prezeguet. E Sant Per en Hereou ema ar chadennou en deus douguet e Jeruzalem hag e Rom. E Sant Sebas- tian diaveas kear ez euz eun toul dindan an douar pe eur vengleuz eleac'h ma zeo bet eur pennad corfou an daou abostol Sant Per ha Sant Paul. E bered Santez Agnez e veler eur chapelic eleac'h ma roe Sant Per ar vadiziant. Evelse ne aller ober nemeur a gamejou e Rom ep caout eur mean bennag hag a zigas da zouch euz a brins an Ebester.

Brema ez euz eur bloavez bennag eun den difeiz a zistroaz oc'h Doue o velet he vap oc'h ober he basc kenta. An den-ze, evel ma lavar he unan, n'en doa bet tam desca- durez christen en he vugaleach, hag evelse n'en doa ive tam relijion pa voa deut da veza den. Dimizi a reaz, hag he c'hreg, petra bennag ma voa ive eur gristenez divar c'horre, ne voa ket gouscoude ken dizoue hag hen. Fal- lout a rea dezhi e tescje he map ar c'hatekiz hag e raj e he basc: « Rag evidonme, emezhan, n'em bije ket sonjet lacat va map da ober he basc; n'em bije ket sonjet zoken lacat he vadezi ma ne vije bet nemedhon va unan. »

Ar potrig-ma a ioa dizouch avoalc'h, hag an tad, petra bennag ma her c'haric evel he vugale all, a derea alrez outhan. Ar vam a lavare: Gortozit gantha; guellaat a rai pa en devezo great he basc.

E guirionez, pa en em lakeaz ar bugnel da zeski he gatekiz, e voue anat ep dale e furea, e teue sentus- soc'h, a soc'h da suji. An tad a evessea oc'h kementse, hag a voa souezet meurbet. Ar vam ive a voa deut aket- us da bidi. An tad en em lakeaz ive da zilaou ar guentel catekiz, hag a zescaz ar pez n'en doa ket desket dre he oll studi, evithan da veza eun den gouezic.

Dont a reaz ar sizun ma tlie ar vugale ober ho fasc. An dervez kenta, ar potrig o tont euz an ilis goude an ofe- ren, a deuas da gaout he dad: « Va zad, emezhan, an deis ma rin va fasc, em eus pardon da c'houlou diganeoc'h euz an oll faziou am eus great en oc'h enep. Sonjit eta em oll faziou evit ma ho rebehot din ha ne rin ken anezho, hag evit ma root din ho pennos. Ha neuze, va zad, pedit ive Doue evidon. »

« Va map, emezhan; eun tad a bardon ato d'he vap; hag evidon-me n'em eus brema netra da rebech dit. Kendalc'h ato da labourat, da garet Doue, ha da vam ha me en em gavo eurus. Kea, ha bez dinec'h, pidi a rin Doue evidout. »

Neuze ar potrig a ia da boket d'he dad, hag an daelou en he zaoulagad e lavaraz dezhan: Va zad, me am euz eun dra da c'houlou diganeoc'h! An tad a zantas petra en doa he vap da c'houlou digantha, hag en devoe aoun; n'oa ket digor avoalc'h he galon c'hoaz evit en em rei da Zoue. Eleac'h eta lezel he vap da gomz, e lavaraz dezhan: Kea va map, n'em eus ket amzer brema; eber pe varc'hoaz e liviri din.

Ar potrig kez en em dennas kuit. An tad a ias gous- tadig var he lerc'h da velet pelec'h oa eat. He gaout a reas var he zaoulin dirag eun imach d'ar verc'hez o pidi a greiz he galon. Pa en doa great he beden e teuz adarves

Va zad, emezhan, ne ellan ket gortoz ac'han da varc'hoaz da lavaret deoc'h ar pez am eus da c'houlou. Va zad, deiz va fasc kenta deut ive gant va mam ha ganhen d'an daol santell! Roit d'in ar c'hras-ze, grit an dra-ze abala- mour da Zoue ho car kement!

Neuze, eme an tad, ne jomis mui da arguila. Briata a ris va map en eur vouela. Ia, va map, eme ve, ober a rin ar pez a c'houlounez; hirio dioc'han, pa gari crog em dbrn, cas ac'hanon d'as confessor, ha lavar dezhan: Setu ama va zad.

Doue avechou a ra d'an den dere hel d'he c'her en despet dezhan. Guelet a rer eun dra da Zoue, ha goude hen ancounac haer, pe da viana ne vez ket a c'hoant da reb an dra goestlet. Hoguen Doue ne ancounac'ha ket, hag a deu, pa blij gantha, da guerc'hat he dra ha da zigas soueh d'an dud ancounac'haus. Setu petra zo digoezet e kear Auxer gant eur vam e doa goestlet he merc'h da Zoue an deiz ma voa ganet. Goudezo oa deut keuz dezhi, pe da viana ne devoa ket a ners calon avoalc'h evit dispartia dioc'h he bugnel. Uguent vloaz oa ar verc'h, hag ar vam n'e doa ket discleriet dezhi ar goestle devoa great. Gouscoude e devoa he diorroet e guir gristenez. Ar verc'h a greste, a ioa vertuzuz, a garie Doue a greiz he c'haron hag a ioa leun a respet hag a zentidiguez evit he mam. He c'hoant e voa beza leanez, mont da zervicha Doue en hospitaliou o kemeret souci eus ar re glan. Hoguen ne grede lavaret netra d'he mam, gant aoun ne vije ket lezet ganthi da heul mouez an Aotrou Doue. Pedit a reaz he c'honfessour da gomz d'he mam a gue- mentse. Ar c'honfessour a c'half ar vam hag ar verc'h d'he di. En em lacat a ra da gomz euz an dra-ma hag euz an dra-hont. Neuze e teu da gomz euz ar verc'h iaouanc, da lavaret e voa brema en oad da guemeret eur stad a vuez, e c'halje beza marteze galvet da guitat ar bed, da veza leanez....

Ar vam a grene hag a viske liou ar maro oc'h he gle- vet. « Avoalc'h, emezhi: me voar petra fell deoc'h da lavaret. Doue so deut da zouch dezhan, ha gouscoude n'em oa he lavaret da zen, ia, rezeudig ma zoun, pa c'hanas va merc'h, em oa he goestlet da Zoue, ha morse n'em oa bet ar galon d'hen lavaret dezhi. Mes Doue he unan en deuz he lavaret dezhi, ha pa fell dezha caout he dra, ne ket me a rebarbo ken. Ar verc'h so hirio leanez, (seur de charité.) G. M.

Lenn a reeur e meur a gazeten ar pez a zo ama warlerc'h.

E-touez ann ilizou savet enn enor d'ar Werc'hez-Vari, unan euz ar re mui da rempredet gand ar vretouned, eo iliz an Itron-Varia Bulat, a gaver er penn pella euz a eskopti koz Kerne.

Hiz Bulat zo unan euz ar re gaera e eskopti San-Briec. Siouaz! Aozadurioù a oa bet great enn-hi hep gwizieghez hag injin, ha dreist-holl, ar c'hoadach euz ar c'heur. Kempennadurez displeg, hag a oa bet koulskoude paet evel ober eur micherour gwiziek.

Eunn tour caer savet enn deizieu Sant Bernard, a c'hortoze ma vije curuuet enn eunn doare d'eread, pa z

eo bet hanvet ann Aotrou Daniel p'ersonnel parous Batac. Ar belec gwizieg ha devot-ze a lakeaz koutant d'ann he benn da ober ann dra ann diardissal, ha da ober lavaret ann diyeza, ma vije eunn dra behnako dic'halluz euz c'hwizieghez, da eur galou evezuz ha da eur fell kear. Sonjal a reaz, stinka daou c'hant t'roatad temp eun t'rad euz ar hirou ker-ze a oufe sevel d'or masounerien e helle ten eun anzeriou t'raemet.

O trec'h kement a leze out haug mag a berou an dud, hag a berou t'raet kement en defoer eun gwiz great koll, caloug d'he p'ed d'ann Aotrou Daniel evel eunn Escop, breizad heud ebet, ram Escop Craveran, ann Aotrou Daniel en em lakeaz rener al labouron, p'ikel mein ha labourer he unan. Siouaz! gand eun t'rad masounerien euz ar re, ann Aotrou Daniel eun t'rad peur c'heut a trivec'h pe c'heut miz ar pez labouret euz ze, hag hirio ann deiz, bit toulliz Bulat zo g'welet he pemzek leotro war dro, bit digas sonjal d'ann t'rad ha da Dregherindiz, euz ann holl t'rad eun t'rad euz ve ho zadou koz e lec'h santuzia b'ic'h d'ann t'rad.

Ann Aotrou Escop a Sant Bric'ha ha Dregherindiz deuz heuniget ann t'rad euz c'hwizieghez ann t'rad a viz mac. Ar pastor euz c'hwizieghez he unan a holl gwiz loc'hevit hini all euz he eskopti, zanaout gwizieghez ann Aotrou Daniel diwar benn ann t'rad euz ann t'rad euz ghez ar pez labour en deuz great. P'astour ann Aotrou Escop en deuz leket ar baleo dellezle-ze e repara eun t'rad lonied a enor euz he iliz varc'h. Biskop auz neou euz dic'haouet gant mui a zereadeghez. Ann t'rad euz ann t'rad eskopti Sant-Briec, hag holl mignonet ann Aotrou Daniel en em laouenno pa glevint lavaret euz ar verc'h d'ezhan eunn desteni ken eun t'rad euz ann t'rad euz da lakaat e stad vad ar monn manchois euz ann t'rad.

E-pelec'h o deus great himennou ho fasc kenta. Itron a c'hoad hag a lignez huel, pa voa deut o jet braz, e deveze plijadur o c'houlou digant ar re o gomz o d'ur thi pelec'h o doa great ho fasc kenta, ha pa e deveze clevet ho respont.

- C'hui lavarfe, emezhi, pelec'h em eus-me great va hini?
- Eveldomp-ni ive, eme eur m'ev'he coze, e creiz an dispac'h, en eur solier foen bennag peier em e'haoc'h.
- E falloc'h leac'h evit an dra-ze oa eme an t'rad?
- Neuze oc'h eus great ho pase kenta en eur c'haou pe en eur c'hraou?
- Ne ket, falloc'h c'hoaz.
- E creiz eur c'hoad oa ia, neuze, pe seic'com eur parc bennag?
- Ne deu ket ganeoc'h, falloc'h c'hoaz.
- En eur vag var ar mor?
- Guelet a ran eo red din lavaret deoc'h. En eur bac'h (eur prizon), en eun toull dindan an douar eo em eus recevet va Doue evit ar vech kenta.
- Neuze an Itron a lavare ar pez a ver kimp ama euz gomzou:
- Er bloas 1793, he zad a voa en arme, ha m'ha voa da veza tec'het euz ar vro hag en doa cuzet he c'hreg

hag he vere'h e leac'h ma sonje dezhan de dajet ket d'ho c'hlasc. Hogen dizoloet e vouent. Neuze ez oajalez a Indazet. An Itron a voue croguet engi ha casset d'ar prizon. He merc'h ne devoa ket c'hoas daouzeg vloaz hag a voue lezet. En he guele edo pa voue casset he mam d'ar prizon. Antronoz ar vere'h a rennas mautri, gant ar glac'har pa velaz e vanke he mam dezhi, ha ne bouezas ket ken ne devoa gallet gouzout pelec'h edo. Eur mevel coz a voa chomet gonthi he zicouras da glasc he mam. Caout a rejont an tu da gomz oc'har goard pe ar jolier euz ar prizon, hag ar vere'h a reas kement dre he daelou ma c'hasantaz ar goard he c'hemeret en he di. Bez' en doa eur vere'h en oajou ganthi, hag en em zerviche avechou anezho ho diou evit cas honet ha dour d'ar brizonerien. Bez' ez oa zoken en eur c'horn euz ar prizon eun-toul tenval, hag ar jolier, ep rei netra da zonzal d'ar brizonerien-all, a gavaz digarez da gas di ar vam hag ar vere'h pere a ellaz evelse en em velet eur vech bennag ha lavaret eur goms bennag an eil oc'he eben.

An Itron a jomaz eur pennad mad er prizon araog ma voue casset d'ar maro. Ar pez a rea muia nec'h dezhi, eo he merc'h ne doa ket great c'hoaz he fasc kenta. Gouzout a rea ez oa e' kear, cuzet eun tu bennag, eur beleg coz euz he anaoudeguez. Lavaret a reas d'he merc'h cas ar mevel da glasc ar beleg-ze, ha mont he unan d'he gaout evit he bidi da rei d'ezhi he Doue, mar he c'have he stad d'he reseo. Ar vere'h a gavaz ar beleg coz, hag itema, goude beza he freparet, a roas dezhi daou hosti da gas ganthi d'ar prizon, rag gouzout a rea e devoa kement a izom ar vam da reseo he Doue evel e devoa ar vere'h. Evel na elle ket mont he unan d'ar prizon, ha ma voa neuze ar gristenien er stad ma edont e comansant an Iliz dindan an tiranted, ar beleg coz a reaz ar pez a reat ive en amzeriou kenta-ze. Antronoz vintin'ela, goude beza pedet Doue, adoret Jesus er sacramant, ha scullfet calz a zaelou, ar vam a gommuniaz he merc'h, hag en em gommuniaz he unan. Kementse a voue eur c'hras vraz evit an Itron, rag eun nebeut dervezion goude e voue guillotinet, hag he merc'h en em gavaz ep tad na mam.

Setu aze pelec'h ha penauz e reaz ar vere'h-ze he fasc kenta, ha setu ar pez a lavare pa voa deut coz, hag ar pez a rea dezhi se uilla daelou ha c'rena c'hoaz o sonjal en enerez e devoa bet en amzerion-ze. G. M.

MARI ABIVIN.

En amzer genta eus an Iliz, ar hayanet o deus clasquet e peb fecoun pilat ar pez en doa savet Doue. Epad ar bloaveziou trubujlus-ze ar gristenien eus ar ger a Rom a renge cuzat dious ho enebourien evit mont d'an oferen ha receo ar sacramanchou. Neuze e zoa dindan ar ger vras ha pinvidie-ze mengleuzion toulet gant ar Roumanet evit caout mein ha treaz da ober ho zyez. Qempennet gant poan ha labour, ar mengleuzion-ze hanvet *Catacomb*, carget a bep amzer a relegou sant ha

merzerien, a zo c'hoas brema eun dra a fell da velet kement hini aia da Rom. Ma veot laqueat peot da-beni, a lavar eun Escop, ho defe tri c'hant leo horden. Eno epad tri c'hant vloas en em daolis ar gristenien evit menli Doue epad ma edo an droue speret o ren a zioch ho fen, ac'hang e save ar merzerien, pere ho deus gwalc'het gant ho goad ar ger a Rom.

Ho tadou ho deus gwelet gemet all en ho amzer. An oferen, lavar et dindan d'ennou soul ha mogerjou mogedet, badiziantou pelourenjou, guret e creyordie e grain'hou. Dian amzer ma lavaran, beleven Plabennec a lavare an oferen en eun ty tost d'ar presbital, e Landouardop. Eno eo e reas Mari Abivin he fasc kenta; disquez a reaz neuze pegen doun, oa eat ar relijion en he c'halou; ne he doa ket nebeutoc'h a feiz o receo he Doue, en eun ty digor d'an avel, eget n'ho doa an tri Roue Maj o velet hor Zalver e craou Bethlehem, pe gristenien Rom oc'h adori dindan an douar an hini en deus crouet ar hed oll.

Perec lavaret hirroc'h var an dervez caer-ze eus a vhez Mari? Beza zo traou hac a renq'chom etre Doue hac an ene; an hini a zo pe a zo bet great he galoun a c'hoar petra eo caret Doue ha beza caret ganthi. Pa vije roet da eun den teod an velez, ne c'houlc'het lavaret eurusdet eun epe pur pehini a zo unanet gant Doue. Nebeut a dra em beus ive da lavaret var bhez Marger bloaveziou eus e c'henta yaouankis. Cals a dud santel a zo bet eus a here den na gomze epad meur a vloas, hac ho deus disquezet da c'houde dre ho oberou pegement a vadou ho deus dastumet epad an amzer-ze e gweled ho c'halou. Hor Zalver he unan, squer an oll gristenien, a zo bet chomet tregont vloas e Nazareth, gant Mari ha Joseph, eb en em rei da anaont, hac an Aviel pe lavar eus an oll amzer-ze nemet eur guer. Douja rea dez o peb tra.

Gwelet a reimp brema e buhez Mari Abivin nac a draou he doa desket escol an Aotrou Doue, nac a santelez he doa gounezet: pe guir pa deuas he amzer da veza anaoret gant an dud, peb hini a c'helle caout neuze enphi eur squer eus ar re vella. Beza zo en he buhez diou den merket mad, ha dishenvel; lod eus e bloaveziou he deus tremenet el Leuhan, lod all e bourg Plabennec. Al loden genta he deus roet d'al labour ha d'an oberou evit an nessa, al loden all d'ar beden ha da garantez Doue.

Mari Abivin n'oa get eus ar rum tud-ze, pere var an digarez ma ho deus danvez a chom da eana an darn vuia eus ho buhez, hac a laer amzer var al labour evit en em rei var ho meno d'ar beden. Red eo ma ve bet sclerijennet gant Doue he unan, pa zeo gwir n'hem deus gallet den biscoas caout abec enphi. Gouzout a rea pe naos al labour hac ar boan a zo lod eus hor bara hac abaoñ hor Zalver biscoas christen mad ha deo llas dirazho. Qementse etouez da re ho deus feiz, ha merz calon evit al labour, bouez eo ar re a vije eat da dieul ar vaouez-ma. Savet himdez da zioù heur goude anter-noz, Mari

sebb ober trouz na dihana den var dro an ty, en em laque a d'bedi bete pe der ben; neuze e zeo da c'helevar re bial, ha gant ar re genta e vije ato o vont d'ar park. Meur dig hini var ar meuz hen deus bet a dactadou nos vezioù orgwion pes dost; mez sevel da zioù heit epad ar goad, hec'hsitac en an; ha qementse himdez, hac epad martreze ouспен daou ugent vloas, ha ead a vintin' e ve renn doa distor. Eur gwelet mo hac en p'ehad mad a gousquet, spa vez izom ablijidul bep d'ol; ha soul vat a labour a vez bet greet epad an uleiz isidul vi a squister a vez en izili, ha soul vat eucave treaz a gwelc'ha berr an noz. He zizezel eta, ha dibradaoc'haro en des pot dezha ar c'horf araoe ma hen devez bet e gornu, hac ober an dra-ze bemdez, eb izom dre gararañtez ebifen evit ar binijen, an dra-ze, a lavaran, a zo caout blontez eren ha beza dizamant ous ar c'horf. Gouscouds Mari Abivin a zo bet coz, pevar ugent vloas pa varvas, hac evit beza savet diou heur araoe ar re all, ato e vez da genta e penn an hero. Potred kalet a zo bet meur a vech er parkeyer ganthi; neus fors n'oa hini anezo sigwest da vont en tu all dezhi. Lavaret a rer memes e zeus bet eat d'al Leuhan mevellou ha goazet all gwez fec s' hac ampar, hac a iee d'ha a ben caer evit gwelet a red soul Plabennec diar gwazet beza trec'het el labour gant soull vaouez, lod ho deus renget plega, ha goude beza he 19 gwelet el labour ar n'ho doa get a vez oc'h anzo ne s' b'heleht ket ober kement hac h' Ouspen-ze oll e ka- brennatezi, ha nebeut eouls ha beteche maro peb hini en a devije greet gant plijadur kement a lavare. Gouscouds ne ve ket brao da veur a hini clasq ober eun ho vevellou ar pez a ree Mari Abivin gant tud he alzy. Alieze vije lavaret pedennou er park eb eana al la- bour, hispicial ar Rozera. Eun dra gaer oa gwelet ar plac'ho yaouank-ze o lavaret eun Ave Maria bep tro ma sanqe ar bal en douar. Gwechal sant Izidor a ree qement- mall, en eungas he ejennet e treid an hero, e lavare eur s'beden vad bennac; nac an ejennet, nac al labourer, nac sal labour n'en em gavent falloc'hevit-ze. N'em beus ket id gwelet e nebelec'h, na c'hevet lavaret gant tud a vicher-chaot'ka abenne e ve gwelloc'h labourer an douarou; ha adisquissoc'h al labourerien; pa ho deus ar re ma kañet a kanad'ebnou mezu desket er c'hoignou-tro; pe comtet a mat vaillon divalou Biscoas ar beden n'he deus greet a droug da vadou ar duar; ha ma vije al labourerien gwel- loc'h da bidi, martreze ho douarou ha vije pinvidioc'h e frouez mad. Evit gwelet Mari Abivin er park, den n'hen devije a gwezet peur oa eat d'hi var yun; ha gouscoude da vener- sha da sadorn mezebfe tam dious ar mintin. Pebes kentel a da gement all a dad pere ne c'hellont ober tam pinijen var ho meno abalamour d'ho labour, ha ma yuhont a merse nemet pa ofenkont d'elana ho c'horf dious ar a hoasson. Daou zervez ar sizun a roe Mari da Zoue ar gwener hac ar zadorn. Da vener e teue abred d'an bonig, a eun dieur valestoc'h he doa da ober meuz an hini a zav- s'bandez da zioù heur a c'het beza abred en Iliz. He vev- a Goude beza recevet he Doue, a great liant ar Groas

hac e devoa sonjal, e zeo d'ar ger evit labourer. Mez ar zioù na he devoa ket, eun dervez he deus gallet; neuze e tene abred d'annus, hac epad an dez e vellec'he enphi, nemet eur pennad amzer a gemere eun t'ou- er banne zouben. Oher a reas eta bep sin ar pezh he gwelimp oc'h eber bemdez epad ar pevar zioù was bi- veza eus he buhez. Eus vaouez ket kañte eus e c'hele- Doue, ket kañte eun labour, hac en he beza nemet mad evit ar beaurien.

LIZIRI DA DUD DIVAR AR MEAS

Pa c'hoaz gheas he deus roet d'heomp eun trede nis- bihan, nann, neus ket re a dud honest var an douar; nann, hiken ne vo re a vugale eun t'eghezion kristen hag hem beus eun dou vras bep tro ma velan Doue o la- kaat eun elik, bihan eun t'eghez reuket mad e pe- hini an elik-ze a vevo hag a gresko heb saotr sac v'ann he vadian. Na net krouadur, siouas i ne mint ket ken euras? Madalen Penn skan dimezel var leop, eun despet d'he c'herent da lanuz, ar c'hemeper, e deus ive nevez bet eur map; mes hegnas heu d'go, honent ma kemer an hent mad; ma ligonez kemerad ne vo ket henvel, da viana, ouz he dad. N'ouzon ket memes hag ar gherent-se hag hi a hello beva he c'bravadur e kreis ho faouente; mes sur n'hellint ket ober an heur eur c'hristen mad eun eun t'eghez henvel ouz eun ivern. Madalen eo an trede plac'h euz ar barrez a ghemer an hent tall. Ar zeir gouscoude int h'gale da labourerien honest ha kristen, e eun v'onez, e bueza a ra brema euz ar bevar c'horn ar hed eun avel ar v'oull hen- kren ma tibrad an toennou divar an oll dez. Ha sonj e deus, va c'hoaz, peghen sioual e he em gavemp gwe- chall dirag hon tad hag hor mam, pere gouscoude a ziskoncez evid homp re, kazi, a garante hac a legered- ghez? Eur goums, eun taol lagad hebken a re d'heomp senti heb sonjal na diroll, nag en em rev'ell, ha zave etre-z-homp, trops ho boutou hebken a re d'heomp en em unani. Mes brema, e zeus mil boan o klask suj ar vugale; eun tad, eur vam a dremen ho oll amzer o c'hourdrous, hag ar vugale ne veot van ebet, ne reont nement ober goap euz ho c'herent. Ar merc'hed n'int ket memes furroc'h eget ar b'otred. Koums a reont egnis prinsezet begou'hour, ha a reont egnis ar c'herent, divizout a reont d'ar leun pep tra ober a reont ho feunig o unan hag evit kaout ar peoc'h gant o, ho c'herent a renk plega hag en em zaouida. El leac'h bea selouet ha doujet, ar mammon a renk dis- put ouz strink'elbou a beuz e'k vloa, hag a zo t'etreda ra- doiezet. Rak-se, pa vo c'heleht iliz e n'edzo he pebra fei- a vam, e renk'et goulen avis ar vere'h, an dervez da a- gonda brema ar messaen. Ha pa zigouez ar mare ha

mizi! Ah! neuze ne dit ket da bropozi d'ar strinkellou-
e hema pe hen-hont; nann, nann; rag ar choas zo dija
reat heb-avis; an tad hag ar vam. An oll merc'hed eüru-
amant n'ant ket euz an danvez fall-ze; mæs a dra-zur, an
vel a revolt hen doa c'huezet ive kren var spered Ma-
alen: anzavomp gouskoude eo bet kollet ar plac'h-ze
re faot he c'herent: rak, re deñer enn lie andret, ar re-
na ne c'houient reñs netra dho Madalenik; roet e vije
l'hezhi permission da vont d'an oll bardouniou, d'an
oll foariou, d'an oll nosveziou euz a bere e tistroe ato
ior plac'h pell goude kus-beaul hag e kumpagnunez
sul labous-noz bennak pehini e c'hundue *kazel ouz ka-
zel* betek toull he dor. Er pardouniou, er foariou hag
enn nosveziou-ze eo e reas anaoudeghez gant he diou
nignounez Chanig ha Perrinik; bep sul, bep gouel o
dije guelet an teir-mä er memes kompagnunez, o c'hoar-
in, o koums goustadig, o kana chansouniou skan hag
o terc'hel konversationou kazi libertin: Mes ive o zeir
ant dispriet gant an dud honest; o zeir o deus mifinet
no c'har er memes hent, hag o zeir brema o deus poan
na paourente beteg ho daoulagad. — Hoghen va c'hoar
ghæs, ne peus ket izoum da vea estonet euz malheur an
deir *gammambre-ze*. Selaou ar rest euz ho histor: El
eac'h evessaat ouz ho stam pa zeant da zioval al loened
e kollent alies ho foenchou en eur lenn levriou glaz,
moug ha melen pere o doa dija chervichet da gheñent
keghinourez zo e kear hag a zante c'huez ar brein euz
an dianveas ha c'huez flerissoc'h c'hoas euz an diabars.
Al feoriou-ze a veze digasset d'heo gant eur c'houzin
libertin hag enn-o eo e teske an teir strinkel ar pez a
renker da zianvezout evit bea plac'hed honest. Penaus
o dije konsantet an teir *hek flour-ze* dimizi da eul labour-
er douar fur hag honest goude bea lennet kouchou
brein e pere ar rouanet a zimes da zionallerezet denved;
ne zo sur hon teir follez o deus ive gortozet e teuffe eur
oue pe eur markis d'o goulen, hag o velet na zigoueze na
oue, na markis da offri d'heo tantelez d'en em c'holo, pe
zarros da bourmen, o deus stignet ho lassou evit tapa
peh a damik *frak*, pere, goude bea great d'heo dansal er
pardouniou a ra d'heo brema *valsi* enn eur fesoun all.
Louizaig an ty-all ive p'en em lakeas e chervich an itroun
Valmor a grede dalla eun aoutrou pinvidik bennag euz a
Vro-Zaos dre he bleo rous hag he liou melen; mæs,
siousas! goude bea bet e-unan troumplet gant eun nebeut
mad a zaozichen, e kavas gras dimizi da eur marc'hadour
allumettes-chinik. Va c'hoar ghæs, gra da brofit euz
an exemplou-mä evit sevel da vugale e doujans Doue
hag e kara-te ho zad hag ho mam, evit na zigouezo bi-
ken gant-o ar malheur da zilezel ar m'ziou ha d'en em
zizober euz avizou ho c'herent. Va c'hoar ghæs, diouall
mad da ier ha da zenved, pa ze guir e teu hemde stan-
koc'h stanka er vro al lern hag ar bleizi, ma ne daoles
ket evez, abred pe zivezad da ier ha da zenved a dec'ho
hag a vo sammel.

REFLEXIONOU.

Kaout a ran eur gourc'hemen pehini a ordren d'ar
vugale karet ho zad hag ho mam, mæs ne gavan hini

ebet pehini a ordren d'an tad ha d'ar mam karet ho bu-
gale; Perak'ta Doue n'hen deus ket great an eil gour-
c'hemen-mä? A balamour ma c'houie ervad oa inutil:
Ia, dre natur, an tad hag ar vam a gar ho bugale, re me-
mes aliez hervez Doue. Pa ne da ket mad ar vugale,
Doue a lavar o c'horrija; ar c'hountröl a zigoues: Alies
ar gherent a losk ho bugale da ober ato ho bolonte
propr n'eus fors petra reout; ato ezint doussik, kalou-
nig ha braoig ho mam; ar vam-ze memes a zesk alies
d'he bugale skoï gant-hi, el leac'h distruja an hioulou
fall a velet o sevel enn ho c'haloun: Setu perag ar pôtr
pe ar verc'h, kustumet da velet ho c'herent oc'h ober ho
bolonte, a zalc'h enn andret ar gherent-se, speret a
revolt pa devont memes bras. Neuze ive ar vugale-ze,
kustumet da feneanti ha da ober ho bolonte, ne ga-
ront nemeur dimizi da eul labourer pe da eul labourerez
douar. Kridi a reont n'eus eürusted nemed er c'hæriou;
ober a reont eta al lez d'ar marichal-ma, d'ar c'halvez
pe d'ar c'here-ze; ober a reont al lez d'ar ghemenez-
ma, d'an davarnourez-ze: Ha ma n'hellout kaout na
marichal na kalvez, na kere, na kemenez, na tavar-
nourez; e vo c'hoas guelloc'h ganto dimizi da eur *ra-
mouner*, da eur vatez a gampr pe a gheguin, eghet da eul
labourer, pe da eul labourerez honest divar ar meas.
Petra deñt eta da vea an dud-ze ganet var ar meas, mæs
pere a zimez da eur micherour pe da eur vicherourez a
ghear? Kemeret a reont eun tamik kampr enn eur ru
bennak distro, dibri a reont ar rest euz ho gueneñen;
kemeret a reont plegou fall: evit achui ho stal e keme-
rint eun tamig hostaliry euz a behini an daou zeu nevez
a vo ar guella pratik: araok daou vloa, no devezo mui
enn ho zy nemet gle, picherou ha barrikennou goullou:
ho bugale a vo savet fall: erfin hi ha ho bugale a vo
abred lakeat var listeñ ar beorien, ha pa vint klan e vint
kasset da vervel d'an hospital. O. H.

Hano ar Zant evit ar Sizun-ma.

- DILLUN 1. GOUERE. — Eisevet Sant Jan Vadezour.
- DIMEURS 2. — Visitation ar Verc'hez.
- DIMERC'HER 3. — Memor a Zant Paul, abostol.
- DIZIQU 4. — Sant Jan Facord.
- DIRGUENER 5. — Sant Anton a Badou.
- DISSADORN 6. — Eisevet an c'hestel S. Per ha S. Paul.
- DISSUL 7. — Pevare sul goude Pantecost. Gouel goad
presiuñ hor Zalver Jesus-Christ.

Abostol ar Zul:

Va breudeur, gouzout a ran ervad ne deo netra poaniou
ar vuez-ma e kichen ar c'hloar a dte eun deiz en em
zispaca enhomp. Rag kement tra crouet a zo a c'hortoz
hag o deuz ar brassa mall da velet oc'h en em ziskuez
ar c'hloar-ze a vugale Doue.

Rag brema an oll grouadurien a rane plega-ha ser-
vichout d'ar fongue, ha ne zujont ket a volonteñ vad,
nemet epken evit senti oc'h an hini a ra dezho suja evelse.
Hag esper o deuz e teui eun deiz ha ne rankint mui suja
evelse d'ar vreinadurez, hag o devezo perz e frankiz
hag e gloar bugale Doue.

Gouzout mad a reomp ema bete vrema ar grouadurien
oc'h hirvoudi; hag evel pa vent e poaniou a vuillout
ha ne ket ar grouadurien-all epken, mes ni ivez, evit
beza bet deomp kenta donezouñ ar Spered-Santel, ni a
hirvoud enhomp hon unan, o c'hortoz ar pez a esperomp
evel bugale Doue, o c'hortoz ma vezo delivret hor c'hor
a sclavach ar pec'het, dre Jesus-Christ hon Aotrou.

Lizer Sant Paul d'ar Romanistel viii. 18. G. M.

Gwelom brema d'eom, d'om (a nous), deom (allons),
lavarom (disons), kanom, c'hoar-zom,.... skrifet eb p.

Yann: « Te a lavar, Per, e raan eur faot o skrifa
d'eom, d'om, deom, lavarom, kanom,.... eb p. Me a lavar
d'it e reez, te hag ar re-all, eur faot o lakaat eur p e fin
ar geryou-ze. »

Per: « Prouv kemment-se. »

Yann: Pa gari, Per. »

« Da genta: Ha n'ez peuz-te morse goullennet digan-
it da-unan, va mignon Per, petra eo an omp-ze ec'hiz
ma skrifef, pe an om-ze ec'hiz ma scrifan, peini a gevez
e dilost *ouz-om, lavarom, kanom* ha geryou all evel-se?
An om-ze a zo eul *lec'hano* pe *lec'hano* (pronom). Beza
eo-äp mæmez, evid ar c'hrizyenn, gan *am, em, me, ma*
(mor, mon, ma, mes). *Am* a ziniñf moi, mon, ma, mes;
em, ivez, *ma*, ivez;.... Gwel ar skuerennou-ma: *Me* a
gar; *te ma* c'har; *mar am* pe *em* c'harez; *ma zad*; *ma*
mam; *ma breudeur*; lavar *d'am* zud; lavar *da ma* zud;... »

« Euz *am, em* e teu *om* (nous, notre, nos). *Om* a zeu
da veza *on, or*, ervez ar geryou a zeu war lere'h. »

Per: « Penaoz e teu *om* (nous, notre, nos) euz *am, em*? »

Yann: « Penaoz e teu *meot* euz *maout, eskern* euz *as-
korn, dent* euz *dant, kroc'henn* euz *kroc'henn, denved* euz
dandad, Ebestel euz *Abostol*,.....? »

Per: « Penaoz e teu *om* da veza *on*? »

Yann: « Ec'hiz ma teu *kem* da veza *ken*: *kem-ment, kem-
meska, kem-penna; ken-ober, ken-töli, ken-dero*,.... »

Per: « Penaoz e teu *on* da veza *or*? »

Yann: « Ec'hiz ma teu *an* da veza *ar, eun* da veza *eur, ken*
da veza *ker*: *An den, ar mab, eun dorz, eur bara, ken dister, ker zod*. »

Per: « Hag *om, on, or* a ziniñf e gwiryonez *nous* no-
tre, nos? »

Yann: « Ia, ec'hiz *maout* a ziniñf eur *maout* epken,
ha *meot*, kalz *meot* pe *maouted*, ec'hiz *dant* a ziniñf eun
dant epken, ha *dent*, kalz *dent*, *ken gwir* all ar geryou
me, ma, am, em a verk *eunved* (singulier, hag *om, on, or*
a verk *aliezved* (pluriel). Gwelom se dre skuerennou.
Deja or-beuz hen gwelet evid *me, ma, am, em*, gwelom-
hën brema evid *om, on, or*. *Ouz-om* (ä, vers, contre
nous), *war-n-om* (sur nous), *lavar d'om* pe *d'eom*, evid
lavar da om pe *da eom* (dis ä nous) — Leoniz 'o deuz
stagetez *ouz om*, ec'hiz ma 'o deuz greet *ouz oc'h* (eoc'h):
karet a reont kalz astenn ar geryou, awechou eb rezon
hag ebiezom. — *gan-om* pe *gan-eom* (avec nous), *pa*
lavar-om (quand dire nous), *deom* evid *daom* (aller nous),

pa yeomp, pa zeom, pa heom (quand aller nous) pime
grizyennou verb evid sinifhout *maout a zo* parson
hag ivez *ka* pe gentoc'h *he*. Sinifit al loc'h hon
grizyennou-ze hag oz peuz ar verb *drezoheg*
on tad (notre père), *or mam* (notre mère), *or breudeur*
(nos frères), *pe or euz* pe *pa or beuz* (quand nous sommes)
on digallit, *on miri*, *on droug* (présentez-nous de
mal) »

Hogen, e am, em, me, ma, pe bedl, perag e lakaat
eur p e om, eb oz om a bedl? Hag ne bronouset ket
Deomp a ma a bronouset euz ma vez skrifet *deomp ma*
ma, ha neket *deomp pa ma*. An p-ze ne ra nemed kuzet ar
c'hrizyenn euz om. Lakaat eur p e om a zo ec'hiz lakaat
eun dortel war gein eun demgreet leont d'ant gan
Aotrou Doue. An re a zo terna zo ned mad tra
truantomid ezo, ma kenom, mes n'alyeomp ket da dortel
ar re a zo eon.

« Ar pez a lavaran euz ar p e om, ha e lakaat
ret ivez euz an h e on, or (hag ho) *hon tad, or breu-
deur*. Nag ar c'hrizyenn hag ar pronoms ne c'houlfen-
nont an h-ze aze. Ouspeñ-ze beza eo, evid lavar
an Aotrou Boudant, person Moddity, eun en
contre-sens. An c'hemiz ar skrif *an tad* (on tad) ne
voutont ket eun *heerina* »

« Eur gerig c'hoaz war ar p euz *om* (nous, notre, nos)
hag achuom. »

« Klasket em-beuz er yezou kelleg all (ar brezoneg a
zo eunan euz ar yezou kelleg), en *ar brezoneg*, er c'hem-
reg, er c'horneg, ha n'em-beuz kavet ar p-ze eul e bed
euz ho verbou er c'henta gour en *ar brezoneg* (eul
personne du pluriel), nemed en *ar brezoneg* (eul
Zeuss). Setu ama enn nebeud skuerennou: »

Kenta gour en aliezved (1.° personne du pluriel)

AMZER VREMA (présent)
Verb. iverzoneg, v. kemreg, v. korneg, v. brezoneg, v. galleg
Caram, carun (1), *caryu* (2), *karem-p, nous aimons*

AMZER HANTER DREMENET (imparfait)

No-charmus (3), *carem, caren, karem-p, nous aimions*

AMZER DREMENET (prétérit)

Ro-charsam, carasam (4), *carson, karzom-p, nous*
aimâmes

AMZER DA ZONET (futur)

Carfam, caron, carson, karim-p, ha karfom-p, nous
aimerons

(1). Lavarit *caroun*. Ar c'hemiz gwelet a lakaat
u da zon ou, ec'hiz ma ra c'hoaz an Italianed, an Spa-
gnoleg hag an darnvuia euz ar boblañ. Hizo ar c'hem-
riz a laka w evid talvout ou.

(2). An y er c'hemaeg hag er c'horneg a dalz peur-
vuia, on e serret-ni.

(3). Lavarit ec'hiz ma vez skrifet *no-c'harmitz*. Ar
galleg hag ar j n'ed int ket anavezet er yezou kelleg all,
ne gaver anezho nemed er brezoneg ni, peini en deuz
'o c'hemeret euz ar galleg gan kalz a draou all.

(4). *Carasam* a zo evid *carsam*. Kerneviz a Vreiz-Izel

a gar ivez bouta eun a pe eun e er verb, pa vez diou hag ispicial teir gonsonenn dioc'htu an eil goude e-ben : *Ma brizessoc'h evid ma brisessoc'h ; pa zornaffoc'h evid pa zornffoc'h.*

Remerkit daou dra er verbou skrifet a-ma uheloc'h : 1° ar c'hrizyenn euz *karet*, peini eo *kar*, a zo ar memez er pevar verb kelteg ; 2° ar *p* er c'henta gour en aliezved ne gaver aneza nemed en or verbou-ni.

Y.-K. KERZALE, *belec ar Zalet.*

KELEIER.

Pardon Rumengol. — Edon o vont da gas va fennadou scrit da voulla, pa zeus digoezet dindan va daoulagad eur pennadic scrit gallecdivar benn Pardon Rumengol. Ar pardon, ervez ar scrifagner-ze, a zo bet caer evel ma vez bep bloaz, ha caeroc'h marteze evit na de bet morse. Daouguent mil den, pe ouspen, a greder so bet e Rumengol etre ar zadorn hag ar zul, Netra dudiusoc'h evit gwelet ar bardonerien-ze, deut couls lavaret oll var droad, hag an darn vuia euz a bell, gwelet pe guer c'hoec e pedont ar Verc'hez, gwelet pebez feiz, pebez carantez, pebez anaoudeguez vad, pebez fizians a luguern var ho bizach, gwelet pebez devotion a ziskue-zont o tostaat oc'h an daol santel.

An Aotrou'n Escop a ioa eno evel ma zeo boas da veza bep bloaz, hag evel ma thie en em lacat ac'hano en hent evit mont da Rom, ar veleien a ioa eno o deus cavet tro d'he bidi da gas ho mennoziou d'hon Tad Santel ar Pap. Ar beleg en deus prezeguet en deus pedet an Aotrou'n Escop en he hano, en hano he vreu-deur beleien, hag en hano an oll bardonerien a voa eno, da rei da anaout da Vikel Jesus-Christ pegument ez eo caret, peguen tom eo ar c'halonou evithan en Escoptima hag e Breiz-Izel oll. Hag evel ma zoa eno pire'hirinet, pardonerien euz a guement corn so en Escopti, hag ive euz a veur a garter all euz a Vreiz, ec'h eller lavaret e cas en dro-ma tud ar c'harter-ma ho gourc'hemennou pe ho mennoziou d'hon Tad Santel, dre zaouarn an Aotrou'n Escop, ne ket epken a galon, mes zoken a c'hinou.

Ar reket-ze so bet echuet dre ar c'homzou-ma a veler kizellet var baz aour an Aotrou'n Escop :

Itron Varia Rumengol
En hor feiz coz hon dalc'hit oll !

Pa zea an Aotrou'n Escop d'en em lacat en hent, Aotrou Person Rumengol en deus lennet dezhan eur c'houblat guerz e gallec. Clasket em euz trei ama e brezoneg ar c'houblat guerz-ze :

*Ia, it, Aotrou'n Escop, it da Guar-benn ar bed,
Gant Pi Nao, Pap ha Roue, d'he guichen oc'h galec ;
An hini a gurunoc'h en hano'n Tad Santel
A vezo e pep leac'h ho tifen, ho scoazel.
It eta, cassit da Rom, dar bez an Ebestel,
Gant ioulou ho calon, re ho terved fidel ;
Otreit ma reketimp en dervez-ma ker caer,
Ma veachot dizoan, ma teot curus d'ar guar.* G. M.

An Aotrou Quillivic, beleg evit an dud a vor, so hanvet beleg evit al lestr *l'Invincible.*

Escopti Kemper, ervez ar pezh on eus gallet da anaout bete vrema, en deus savet peadra da zerc'hel daouguent soudart e servich ar Pap.

Ouspen an Aotrou Tephany, secretour an Escopti, pehini so eat da Rom gant an Aotrou'n Escop, ez eus deut beteg enhomp-hano c'huezeg beleg all euz a Escopti Kemper eat da Rom evit goneliou miz even.

Ar gazeten *l'Océan*, euz a Vrest, a lavar e cred e vezo gallet beachi dre an hent houarn etre Castellin ha Landerne abenn an deis kenta a vis du.

Ar c'holera so eat en he dro euz a Vontroulez, a eller da lavaret, rag abaoe eun nebeut dervezioù n'eus ket muioc'h a vervent e kear evit na vez pa na vez clenvet ebet.

E Lannion avad, a leverer, e voal stag ar c'holera eun nebeut dervezioù so.

Ervez *Cazeten ar Meziou* an eost en deus kemeret eun doare vraz abaoe ma zeo deut an amzer gaer, ha dre-ze ive eo comanset da laoscat var an ed, o veza ma c'hesperer caout eost mad. Evelse ar priz euz an ed a ia cals pe nebeut dioc'h an amzer.

Er memes cazeten e lenner eun ali d'al labourerien pe d'an-tieien. Dioc'h ma lavar tud hag o denz evesseat mad oc'h kementse, evit ma rofe ar zaout leaz hag amann eo red miret outho da gaout sec'het. Ar bioc'hennet a vez o peuri er prajeier, er stankennou eleac'h ma cavont dour, a ro an anter muioc'h a leaz evit ar re a beur er menezioù, hag amann guelloc'h ha melenoc'h. Ar zaout o deus gouzanvet sec'het, eo a ro an amann guenn ha blazet fall. Ar zaout o deus peuri seac'h pe o deus bouet seac'h er c'hraou, ne ve ket avoalc'h ho c'has d'an dour eur vech na zoken diou vech bemdez. red e ve c'hoas glibia dezho ho bouet. Ne deo ket en hanv epken eo o devez ar zaout sec'het, mes ive er goan pa roer bouet seac'h dezho er c'hraou ha pa na gavont nemet keuneut da grignat er meas pe lann. An hini a scrif kement-ma a lavar en deus evesseat mad ez eo ar bioc'hennet a ef muia dour eo ive ar pe vella da rei leaz hag amann. G. M.

PRIZ AN EP.

KEMPER. — 22 Even.		PONT'NABAT — 20 Even.	
Priz ar c'hant tur.		Priz ar c'hant tur.	
Guinis....	45 lur, 73 c.	Guinis....	45 lur, 64 c.
Segal....	42 lur, 28 c.	Segal....	42 lur, 08 c.
Eiz.....	8 lur, 20 c.	Eiz.....	10 lur, « c.
Ed-du....	8 lur, 65 c.	Ed-du....	8 lur, 85 c.
Kerc'h....	9 lur, 78 c.	Kerc'h....	9 lur, 50 c.
Avalou-douar	5 lur, « c.	Avalou-douar	4 lur, « c.

Ar Gerant: AR. DE KERANGAL.

Kemper, moulet gant AR. DE KERANGAL, Moullier an Escopti.

FEIZ HA BREIZ,

KELOU A BEP BRO, HA KENTELIOU VAR BEP TRA,

DIGASSET BEP SUL

Da guement Christen a goms ar Brezouec.

Eun Abonnamant d'ar Gazeten a goust :

Evit eur bloas.....	DAOU SCOJET.
Evit c'huoc'h miz.....	EUR SCOJET.
Evit tri miz.....	C'HUEC'H REAL.
Eur gazeten ebken.....	DAOU VENNEC.

Ar baecamant a dle beza great araog caout ar gazetenn.

ALIOU.

Ar scrijou a ve c'hoant da lacat er gazetenn a dleer da adressi oll d'an Aotrou MONVAN, Beleg e Kemper.
Ar paecamantou a dleer da adressi d'an Aotrou SALAN, ebken. An abonnamant a guemerer e ti an Aotrou SALAN, librer, ru Kereon, e Kemper.

KEMPER, 6 Gouere 1867.

Eun dra dizoare eo gwelet eun den dizone, difeiz, ep relijion ; mes eur vaouez ep feiz na relijion so c'hoas dizoareoc'h. Mar deu eur goaz, pa n'en deus ket a zoujans Doue, da veza gwest d'en em rei da bep seurt dizurziou ; eur vaouez ep doujans Doue so c'hoas goassoc'h. Eur verc'h savet e guir gristenez, desket abred da anaout ha da garet he relijion, a deuo ners calon avoalc'h dezhi da lacat he buez var var, da scuilla zoken he goad mar bez red, evit Doue hag evit ober vad d'an nessa, ha stang avoalc'h e velomp skueriou a guementse ; mes eur verc'h savet ep feiz na relijion a ell beza abred goest da rei kentel d'an dispac'herien, d'an dud dizuch, d'ar c'halonou crissa. Eun torfet n'he lacai ket da scrija, ne rai aoun ebet dezhi. Ar c'hatezennou a goms dalc'h mad euz a verc'hed savet evelse ep feiz, ha pere, hag hi c'hoas iaouanc flam, ne varc'hatont ket evit mont keit ha keit gant an dorfetourien vras.

Setu ama diou zimezel, diou strinkel a bevarzeg vloaz hag a deu d'en em laza abalamour ma teue ho c'herent pe eun dra bennag all da viret outho da gaout ho c'hoant. Setu abont eun all euz ar memez oad ha n'en em laz ket ; grosmolat avad a ra, ha goulenn ma vezo discaret an oll dud a lezen abalamour ne lezont ket ar merc'hed da zimizi pe da ober ar pezh a gueront araog pemzeg vloas.

Setu ama c'hoaz eun all, houma so cossoc'h ; eun itron eo, eur gontez zoken mar plich ganeoc'h. Houma ne c'houlenn ken nemet ma vezo lakeat an oll veleien, hag an oll venec'h oc'h ar ber. Kig ha goad beleg pe vanaoc'h a fell dizhi. Ne ket frang avoalc'h varvezhi gant al lezen a brezegont ; ha cridi a ra, ma na ve na beleg na manac'h var an douar, e ve calz aessoc'h beva, hag e teufe ar bed da veza eur baradoz.

Kementse a zigas da zouch euz ar stamerezet-ze a veze gwelet bemdez, ho stam gantho en ho dorn, en amzer an dispac'h vraz e Paris, var dachen ar c'huillotin, hag a gasse gantho ho bugale vihan evit ho boaza abred

da velet scuilla goad. Pa ne veze ket braz an niver euz ar re a gasset d'ar maro, ar merc'hed tuezus-ze aiglevet o lavaret.

— Peuh ! N'eus ken hirio nemet tri pe bevar c'har-rad ! ha c'hoas n'eus ket enho eun den a zoare ! Deac'h da viana oa braoc'h beza o sellet ; bez ez oa seis pe cis carrat en eur renead !

Evit lacat calon ar stamerezet-ze da zudal, oa red e vije eun niver braz a dud da zibemja, pe da vianape vije en ho zouez eun den brudet bennag, eun Escop, eun den a noblans pe a reng huel, eur potrig, eur verc'hig bennag, iaouanc flam da bere e tamante an oll bete zoken ar bourreo ! ha setu aze bete peguet ez a merc'hed, c'hoas iaouanc, pa vezont bet savet ep relijion, ep doujans Doue.

Ha red eo evessaat hag anzao, eme ar gazetenn *Revue de la Presse*, eo o lenn levriou fall e teu ar merc'hedigou-ze hirio da veza ken dizuch-ze en ho c'henta iaouankiz, da veza ker criz a galon hag an dorfetourien vrasa. Pa o deus kerent difeiz avoalc'h evit ho lezel da lenn levriou fall, e sunont ar c'hontam euz ar scrijou milli-guet-ze, hag e tecont, en eun doare bennag da goll ho fenn hag ho skiant. Al levriou fall a ra ato droeg da guement hini ho lenn ; muioc'h a reont goussoc'h d'an dud iaouanc ha dreist oll d'ar merc'hed dre ma lezont en ho eperet roudou ha n'int ket as da gas ac'hano.

Ar c'hazetennou christen ne gomzont et sizun-ma nemet euz an henoriou rentet d'hor Zalver Jesus-Christ er zacramant euz he garantez. Processionou caer, aoteriou dudius savet var an tachennou, er ruiou, en hentchou, evit diguemeret Roue an Env hag an douar, tiez steunet e guenn hagoloet a vleuniou, an oll gristenien paravia o clask rei d'ho Zalver eur merk bennag euz ho c'harantez, setu ar pezh zo bet gwelet e pep leac'h, hag e kaer ha var ar meaz, epad ar sizun-ma.

An henoriou-ze rentet da Jesus-Christ e zacramant an aoter, a dle, eme eur scrifagner, lacat an ifern e coun-

nar. Prinset an denvalijen, ar sperejou fallagr skignet en ear, evel ma lavar an abostol Sant Paul, a die arraji o velet kementse. Tad an orgouil hag ar gaou a die scrignal he zent, hen pehini a so falvezet dezhan sevel ken huel ha Doue, pehini a fell dezhan beza azeulet eleac'h Doue, hag a ra kement a ell evit miret na vezo azeulet map Doue en em c'hreat den. Lod euz a Dadou, santel an ilis a gred penaus pec'het Lucifer, ar peza reas dezhan beza strinket euz an Env, eo ne felle ket dezhan stoui dirag map Doue, dirag an eil ferson, euz an Dreindet a die en em ober den eyidomp. Evelse hirio e ra muioc'h evit biscoaz he c'hallout evit pouza an dud n'o deus na feiz na religion, d'en em zével a enep Jesus-Christ en em c'hreat den. C'hoant en deffe d'ho lacat da veza ken orgouilluz hag hen. An enebour a die eta beza het e counnar o velet an oll o stouet dirag hor Zalver; rag an oll gristenien, ar re zoken a heuil nebeut ho religion a hent all, o deuz er sizun-ma, da viana a zivacas, rentet eun honor heunag da vap Doue er zacramant euz he garantez.

Ar memes cazetennou a goms ive euz an dud ep niver a ia da Rom evit goueliou miz even. Beleien dreist oll a ia a vandennou. Hoguen etouez ar re o doa sonch da vont da Rom, ez euz en em gavet hiniennou nec'het. Ne aller ket mont di ep dispign. Dioc'h eur c'hostez all, an Tad Santel ar Pap en deuz izom sicour, ha calz a gristenien vad a zao pemp cant lurjou evit lacat zouavet e servich Vikel Jesus-Christ. Petra eta da ober? Meur a hiri so chomet er guær, hag o deus lakeat cas d'an Tad Santel an arc'hant savet gantho evit ober beach Rom, hag o deus dioueret evelse ar blijadur o divije bet o velet ar Pap hag o receo he vennoz evit gallout rei dezhan eur merc brassoc'h euz ho c'halon vad hag euz ho c'harantez evithan.

E Rom e labourer a zevri evit purchas kement so red evit canoniza ar zent on eus comzet anezho. Buez ar re so sonch da ganoniza, ar burzudou o deus great, a vez barnet eno en eun doare rigolius meurbet. Ker juridic oar var an traou-ze, ker piz e vez clasket kement a ell diskuez ar virionez pe ar gaou euz ar burzudou a dleer da varn, ma lakeont souezet zoken a brotestanted.

Eur zaoz a voa eun dervez o comz oc'h eur c'hardinal a Rom divarbenn eun den euruz a ioa hano da ganoniza. Ar c'hardinal a lennas dirag ar saoz ar scrijou great evit diskuez oa guir ar burzudou great gant an den eurus.

—Ma vije, eme ar saoz, an oll burzudou discleriet guir gant an iliz a Rom, diskuezet ker selear ar virionez anezho evel ma zao euz ar re-ma, ni ne gafchemp netra da lavaret en ho enep.

—Mad, eme ar c'hardinal, an iliz a Rom ne deus ket cavet e voa diskuezet selear avoalc'h ar virionez euz a nican euz ar burzudou-ze, hag an den eurus ne vezo ket canonizet.

Setu ama hag a zell oc'h ar re a zoug chadennou Sant Per, pe eur chaden bet touch oc'h chadennou Sant Per, pe a zo enhi eur vleuden beunag euz ar chadennou prisius.

Ar c'hardinal vikel a Rom en deus discleriet ne voa ket mad ar chadennou roet gant tud ha n'emaint ket e Breuriez chadennou Sant Per, nemet carguet e vijent gant tud ar vreuriez d'ho rei. Breuriez chadennou Sant Per epken e deus guir da rei ar chadennou-ze. Den ne all guerza ar chadennou-ze nemet en hano ar Vreuriez pehini a die lacat an arc'hant da zével eun arouez (monument) en honor d'ar chadennou-ze en ilis Sant-Per-en-Hereou eleac'h m'ema guir chadennou an abostol. Chadennou Sant Per so douguet hirio gant aleiz a dud. An darn-voia euz ar re so e servich ar Pap, ofiserien ha soudardet, ho douge guiz chaden vontr.

Pii Nao, o respont d'ar gardinalet ha d'an eskeb deut da guinnig dezhan ho mennoziou evit an deis-ha-bloaz abaoue m'zao Pap, a lavare en deus bet abaoue m'ema var gador Sant Per, da c'houren oc'h enebourien ar religion hag an iliz; oc'h ar re a fell dezho disear lealdet, guir, ha gallout. Scrifet em eus, emezhan, liziri, evit diskuez d'an oll sperejou var betra eo diazezet an honestiz, ar guir hag ar religion.

Neuze o trei oc'h an eskibien, e lavaras dezho: «Va breudeur honorus, me ho ped da greski ho pedennou, evit ma teni Doue hag ar Verc'hez didach d'hontenna euz an danjerou bras so en dro deomp.»

«Vikel Jesus-Christ a zavo ato he zaouarn zezeg an Env. Grit dezhan evel a reat da Voizes; scrit he zivrec'h deut da veza diners dre an oad. En em stardit en dro din, evit ma c'hallimp brezelecat ha trec'hi ato.»

An Aotrou Olier, an hini en deus savet cloueret Sant Sulpis, e Paris, so hano d'he ziscleria eurus. Hoguen, evit kementse eo red e ve barnet he scrijou. En hano ar Pap ez eus scrifet da oll veleien escopti Paris, evit ho fidi, ma o defe eur scrit beunag d'an Aotrou Olier, ha ne ve ket bet moulet, d'he gas d'an arc'hescopti.

Ervez cazetennou ar c'hreisdeiz, eo eur blijadur beza er sizunveziou-ma e Marseil ha var aodchou ar mor-ereiz (Méditerranée). Kement lestra-ziblas a zo leun a eskeb, a veleien hag a gristenien fidel o vont da Rom, ha dalc'h mad e clever ar mor hag an aod o tregarni gant ar c'han euz an Ave, Maris Stella, ar Magnificat, ha canticou all.

Ar jardin olivez. — Kement pit'hirin pe bardoner a ia da Jeruzalem da velet bez-ho Zalver hag an douar santel a ia ive ep manc da venez olivet, evit guellet ar jardin pe al liors-ze eleac'h ma en em denne avechou Jesus evit pidi hag eleac'h ma c'hozaz an douar hag ar goad nos kent he bassion. Al liors-ze n'eus ket santeloc'h evithan p'eo guir eo bet trempet gant dælou ha goad hor Zalver, hag ar guez ze enha eo ive ar guez respectapla a zo goude guezen ar groas; Rag cridj a rer ez eo ar guez a zo eno brema ar memes re a ioa en amzer Jesus-Christ. Eis guezen olivez a so eno hag a zo eoz bras. Ar guez olivez pa vezont trouc'het a zao adarre divar ar zouchen, hag evelse ma na deo ket ar re-ma ar guez dindan pere en deus, edet hor Zalver, da viana en deus ballect var ho griziu. Ar peiz zo sur eo ar guez olivez na

voar den pegueit ec'h ellont beva, hag an eis guezen-ma so eno meur a gant vloas so. Pa deuaz an durket d'en em renta mistri euz an douar santel, e lake jont eur guir da baea divar bep guezen a gafchont en ho za. Ar guirze a voa nebeut a dra, eur medin (eur pezig arc'hant) epken divar bephini. Hoguen ar guez a zo bet plantet goude a ranket paea eur guir brassoc'h divarnezho.

Mad, an eis guezen-ma ne baer hirio c'hoas nemet eur medin divar bep hini anezho. Bez edont eta eno pa voue kemeret ar vro gant an durket, da lavaret eo brema ez eus daouzet cant vloas.

Ar guez-ze a so teo divent. Diou anezko so pemp troatad varnuguent da ober an dro dezho. Deut int da veza cleuz, hag evit miret oc'h an avel da vont enho ha d'ho discolpa, eo carguet ar c'hleuz anezho gant mein ha douar. Savet euz ive mein ha douar en dro d'ho zreid evit ma chomint startoc'h en ho za.

Al liors-ze n'euz en dro dezhan nemet eun tamig mguer zeac'h a dri droatad huedet. Scourrou lod euz ar guz-ze so comanset da zec'ha. Gouscoude eroot c'hoaz eur frouezen beunag. Den ne douch oc'h ar frouez-ze. Ar belerinet pe ar voachourien epken ho destum hag ho c'has gantho evit lacat ar galounen anezho da ober greun chapeledou. G. M.

MERZERIEU AR JAPON.

(PEMPET PENNAD).

An teir maouez Madalen, Jannet hag Agnez, hag ar potrig Lois, a die eta beza staguët oc'h ar groas. Gortozet e vone an deis da zont evit ho lacat d'ar maro. Laket e vone var doare grivizi evit na vije ket red dezho bale hag evit na vije ket great a zismegans dezho en eur vont. Ar vech kenta oa marteze ma lakeat graguez a reng huel evelse d'ar maro; hoguen ar verzerzet n'en em glement ket. Caout a rea dezho zoken e voa re a zamant evitho, ha Mam Taquenda a c'houlennas beza stachet oc'h ar groaz evit beza henveloc'h oc'h hor Zalver. Hoguen ar vourrevien a lavaras n'o devoa ket bet an d'urs-ze, hag e voue staguët gant kerdin ervez ar c'hiz. Savet e voue neuze he c'hroaz, hag ac'hano an Itron Ilcaloneg-ze a brezegue, d'ar re a voa deut da zellet, a enep fals religionou ar Japon. Ne voue ket lezet pell da goms. Eur bourreo a roas dezhi eun taol goaf pehini he gouliaz ep he laza; mes eun eil taol a dreuzas dezhi he c'halon. Loizig hag he vam a voue staguët goude ha savet an eil dirag eguile. Madalen a gourache he map. Loizic a zilaoue he vam didrouz evel eun Ael. Eur bourreo a scoaz ar potrig; mes beg ar goaf a risclaz ha n'hen toullas ket. He vam e devoue aoun na deuje da falgaloni, hag a zavaz he mouez evit lavaret dezhan guelver Jesus ha Mari d'he zicour. Loizig, ep beza strafuillet a grias: Jesus! Mari! Ha kerkent e recevas taol ar maro. Ar zoudart a dennaz he glao goadeg eaz a galon ar map hag her sancelas dioc'htu e calon ar vam.

Ne jome nemet Agnez pried Taquenda. Houma a voa laouane, hag e doa eur guenet dispar. He dousder hag

he glandet a denereas bete calon ar vourrevien. Edo var he daoulin o pidi e tal he c'hroaz, ha den ne deus ilhe staga outhi. O velet-se, evit lacat ar zoudardot da zont d'he staga, en em lakeaz he unan kempenna ma c'hellas var dreuzaden ar groaz. En em lacat a reaz eno gant eun ear ket laouen ha ken dereat ma lakeas eals tud da vouela. Ar vourrevien ne douchent ket outhi. Evit gouët arc'hant, dabu pe di maleurus a zervichas dezhi da vourrevien. Evel ne vouët ket an doare da vana eur goaf, e rojont dezhi n'ous ket pet taol araog he skit d'ar maro. An oll a serje o velet ar guir guez-ze, ha prestavoalc'h e vijent lamet var an dud criz-ze evit ho dispens Agnez epken a jome didrouz, ep ober eur glemeden. He c'hleuet a reat o velet Doue hag o c'helver Jesus ha Mari beteg an huanad diva.

Roue Fingo a zonge dezhan en divije great honn d'ar gristenien o scuilla goad ar verzerien-ze. Guellet a reas souden eo muioc'h a gourach en doa roet dezho. An hini zoken en doa dibennet Taquenda a voue ker scoët o velet ners calon ar verzerien, ma c'houlennaz ha ma recevaz ive ar vadizant; ha goude ne c'houlenne ken nemet beza merzeriet he unan. Gouletnet he voue otre ar Roue evit distaga eoufou ar verzerien dioc'h ar groaz; mes a he roas ket, ha ne voue gallet destum ho eskern nemet dre ma coezent. Laket e vone e boestlon disparti, ha casset da Nangazaki; eno an Escop a lakeas menta dezho an oll honorion a allet. An danevel euz ho merzerien, a voue ive scrifet ha casset d'hon Tad Santel an Pap en isterig.

Er bloas 1608 roue nevez Fingo en em lakeaz adarre da ober ar brezel d'ar gristenien. Tri dijenit vertuzus braz hag o devoa labourer calz evit gloar Doue a voue dalc'het gantha er prizon eur pennad mad. Hano an tri gristen-ze a voa Mikeal, Joacin ha Ian. Bez edont e penn eur Vreuriez savet eno dindan an hano a vreuriez an Drugarez. Ar bac'h ma voant enha a voa ker striz hag ar vagadurez a roet dezho a voa reffat ma varvas Joacin enha gant an diebez. Eur ofiser o veza comzet d'ar roue evit an daou a jome beo; ar roue e c'houre hemennaz ho dibenna, hi hag ho bagale. Pa voue casset ar c'helou-ze d'an daou gristen, ho c'halon a zribas gant ar joa. Goulen a rejont zoken beza tourmantet kement ha ma carjet araog ho lacat d'ar maro. Hoguen ar roue a fallas dezhan e vijent dibennet ar c'henta amzer evit ma vije nebeutoc'h a dud var al reac'h.

Pa deuaz eta urz ar roue, e vouët casset er meaz a guær eur gorden oc'h ho gouzoug. Daou zoudart a voue carguet da vont da guere hat ho bagale. Pep a vap o devoa; map Mikeal en doa daouzeg vloaz hag a ioa harvet Thomas; map Ian n'en doa nemet seis vloaz, hag a ioa Per he hano. Thomaz, azaleg he guenta bloaveziou, ne ziskueze caout ken c'hoant nemet da veza merzer. Hag hen c'hoaz en he gavel, pa en em lakea da vouela, o voa avoalc'h evit he lacat da devel he c'houdrour, ne vije ket merzer. Kerkent ha ma clevez e die mervel, ep gortos ma teujet d'he guerc'hat, e lakeaz he zillad caera, e redaz a ziarben d'ar re a deue d'he glase, hag o veza cavet he dad e kichen dor kear, e lamas gantha d'he

vriata ; ar pezh a gargaz an tad calonec-ze a levez. Digouezet var an dachen, e chomjot eur pennad mad da c'hedal ar potrig all. Evel ne errue ket, an ofiser a reas dibenna an tri verzer all. Eur pennadig goude e tigouezaz ar buguel. E ti he dad coz oa bet cavet, ha n'oa ket savet c'hoas. D'ihinet e voue, hag e leverjor dezhan oa red dezhan mont d'ar maro gant he dad a joa da veza dibennet evit Jesus-Christ. Ar potrig a lavaraz ne c'houlenne ket guell. Laket oue dezhan he zae vraoa, ha neuze ar zoudart a grogaz en he zorn evit he gas d'an dachen. Tud ep niver a ica var he lerc'h, ha calz anezho, ne allent ket miret da vouela.

Digouezout a reaz ar buguel, hag ep beza strafuillet tam ebet o velet ar goad hag ar c'horfou maro, ez eas var he zaoulin e kichen corf he dad, sevel a reaz he unan colier he zae hag e lakeas he zaouarnigon a groas var he heultrin da c'hortos taol ar maro. O velet-se e savas trous, lenv hag hirvoud e touez an dud. An oll o devoa truez oc'h ar buguel. Ar bourreo he unan a zirollas da vouela, a stlapaz he zabren hag a redas kuit. Daou all a deuaz an eil varlerc'h eguile, ha ne gredjont ket ken nebeut he zibenna. Red e voue kemeret da vourreo eur sclaf euz ar C'horee. Hema ne vouie ket mania eur zabren, hag a scoas n'ous ket pet taol var benn ha var diou-scoaz an zelig, an oanic hegarad-ze pehini ne loscas ket eur griaden, hag a voue draillet araog ma voue distaguet he benn diouthan. — Ar scritel var behini e voa merket barnediguet ar re-ma a voue casset da Rom.

(Eur pennad-all eur vech-all). G. M.

MARI ABIVIN.
TREDE PENNAD.

Ar garantez evit ar beaurien a zo bet a viscoas an desteni eus ar gwir santelez ; rac Mab Doue, pehini a zo bet-paour he unan, hen deus caret ar beaurien betec lavaret oa deut var an douar ispicial abalamour dezo. Lenn a reomp e buhez an Aotrou Vianney, ar person santel a zo nevez marvet e parres Ars, penaos pa edo yaouank c'hoas e ty he dad, he kemere plijadur o velet gant pegement a vadelez ar beaurien a veze digemeret gant he dud. Pa deuent da c'houlen lojeis, eun tan bras a veze great en oalet, boued a veze roet dezó, hac eun tam colo-fresq a gavent ato evit disquiza ho izili.

Piou, nemet Doue, hen deus desket da Vari Abivin ober kement all? Ne zoa dervez ebet var ar zizun na vije peaurien o tisqen el Leuhan, an or a ioa digor ato evitho ; mez ar meurs ispicial a veze ho dervez gouel ; neuze e vije var an tati eur podad bras a zouben, pe eur vassinad iod ; ha renket en dro d'ho madouberouez, ar beaurien a gemere ho fred en eur veuli Doue. O velet an dud geiz o trugarekat Doue, Mari a zante daelon a blijadur o pignat d'he daoulagad ; hac, evit gwir, mar deus traou er bed-ma hac a ra plijadur da galon an den, eo dreist peb tra ober vad d'an dud ho deus izom. Peden eur paour ; sicouret e gwirionez, a iafe betec ar galon ar c'hriasa.

Ouspenn rei aluzen, e zeus c'hoas ar fecoun da rei hac a ra calz. Eun dra roet a galon vad a zo roet diou vech, hac eun dra roet gant eun den, evel en despet deza, ne ra peurvuia nemet nebeut a blijadur. Mari Abivin a c'houlie e zeus tud pere a gav digez goulenn, pe abalamour ma vez roet calz dezo, pe abalamour na gredont ket anzaó ho izomou. Chetu perac e veze ato digor he diou scouarn evit clevet hano euz ar beaurien mezus pe dilezel. Nac a vech he deus prenet gant an arc'hant he devoa he unan lien ha dillad, evit ho c'has dre guz d'an dud geiz, ha d'ar re glan. Epad an oll amzer eus he buhez he deus bet ar c'his da vont da velet gement hini clan a vije var dro ; neuze he daoulagad hac ispicial he c'halon a roe dezi prest da anaout eus a betra e veze izom en ty ; ha ne eane qen ne devije kempennet peb tra, ha digasset sicour, eb gouzout da zen, mar gelle. Beza zo c'hoas, dre c'hrac Doue, var ar meaz, hac ispicial etouez ar graguez, calonou mad hac a ra evelhni.

Mez ar pezh a laque Mari Abivin en tu all d'an darn vuia anezo, eo ma felle dezi ato caout eur paour bennac da zicour ; sonjal a ree he defe collet he dervez, pa ne devije ket sicouret unan bennac. Pa zee da ober an dro, evit scuilla he aluzennou, ma cave eur paour bennac eb tud hac eb ty, buhan e veze digasset d'al Leuhan ; eno e veve gant azamant hac e varve en eur drugarekat Doue. Mear a vech em beus clevet beleyen ar barrez o lavaret penaos, pa en em gavent da velet tud clan etrozeec al Leuhan, genta ma zeent en ty e c'houlent edo pe oa bet Mari Abivin var dro eno. Var eun daol gwalc het neat, hac eun doucher gwen-cann e cavent pourehasset peb tra evit sacramanchou ar re glan, ha calonou ar re-ma ho unan a ioa bet tenereet gant ar c'homzou ha c'houlie Mari da lavaret ; en eur ger, chom a ree var e lerc'h en tyez, eur c'linez vad a zantelez hac a lavare pelec'h oa bet.

Re hir e ve renka dre scriid kement vad a ree ar vaouez benniget-ze : n'he deus ket ankonnac'heet hini eus an oberou a drugarez, nicun eus ar zicourou a garantez ; ha ne zeus squer vad ebet na roje tro var dro ha dre ar barrez oll. Ez eo credi he defe bet c'hoant da vont d'ar gouent, ha d'en em rei da Zoue ebken ; mez ken az eo compren pebes coll e vije bet evit ar barrez. An Aotrou Bars, pehini a ioa neuze person e Plabennec, eun den a sqiant bras hag a zantelez, eur belec hac a zo beo c'hoas e calon hac e memor he harresionis, etouez ar madoberou all gret ganhan e Plabennec, hen deus talvezet d'ar barrez dele'her an tenzor he doa bet digant Doue. Ma ho deus Plabennegis eta gellet gwelet keit amzer an oll vertuziou o para dirag ho daoulagad, d'an Aotrou Bars goude Doue eo e renkont beza anaoudek eus a gement-ze.

Pa voc roet da entent da Vari Abivin e c'helje ober kement a vad ha renta muioc'h a c'hloar da Zoue o chom er bed, dre an doujan he doa evit he ferson, e taolas a gostez evit hirviken ar c'hoant he doa bet, gant aoun da ober displijadur da Zoue. Gouseoude evit disquizec

pegement oa plijet deza gwelet he vere h' o senti, an Aotrou Doue a roas dezi an dro da gaout ar pezh a c'hoantez ; eb quitaat ar bed, da veza e creiz an dud evel pa vije bet en eur gouent, ha da rei da barrez Plabennec scleroe'li eget biscoas, ar gwel eus a eur zantez.

Var dro ar mare ma varvas an Aotrou Bars, ha ma tenas da berson da Plabennec an Aotrou Qennec, ker prijat gant kement hini hen anavez, Mari Abivin o velet e telle dezi an oad, a sonjas laqat he oll sourey d'en em brepari d'ar maro. Quitaat a reas eta al Leuhan evit dont da chom d'ar bourg. Kemeret a reas eun ty a ioa nevez savet a dost d'an ilis. Pa zoe h' da Plabennec, claskit e doug an ilis hac an tour, rosta ma c'heller d'ar vered, pe gwir ne zeus etrezo nemet treuz an hent a ra d'ar presbital, claskit eun ty a zoare eb beza bras, gwennet kempenn, gant eun imaj eus ar Vere hez en eul lohic a zioe'h an or ; eno eo e deus tremenet Mari Abivin ar pevarzec vloas diveza eus he buhez. D'an amzer ma felle dezi dont d'ar bourg, eur vaouez all, kar dezi, intanzez Frances Abivin, eus a Lanhuell, ha mam d'an Aotrou Abivin, pehini a varvas, yaouank c'hoas, belec e ilis veur Kemper, a fellas ive dezi lezel a gostez sourey eun tyegez, goude beza collet he goaz hac he mab, ha gwelet he bugale all savet ha dimezet. Chetu aze an oll tyad deuet a nevez d'ar bourg, diou vaouez hac ho diou oajet dija. An eff anezo a zo beo c'hoas, hac a c'hell deski da bep hini muioc'h eget na c'hellan lavaret.

Kerkent ha ma tenas d'ar bourg, Mari Abivin a laqueaz en he amzer an urz he deus dalc het abaoue bepret. Lod ho devezo martreze bec'h o credi ar pezh a lavarín ; ha gouseoude e Plabennec e zeus calz tud hac a c'hoar e renkin chom en tu-ma d'ar virionez.

Da beder heur, bep mintin, e veze gwelet ar goulou o para e camp ar vaouez santel. Doue, ha martreze an bini hen deus bet an anaoudegez eus he c'housiann, a c'hoar penaos e tremene he nosvezion, ha pegen aliez he c'halon a c'houlenne gwelet an deiz. Da beder heur antef e zee ar c'hloc'her d'an ilis evit sijn an Angelus, ha digon an orion. Araoc ma vije echu ganhan, eur vadez a veze daoulmet e qichen eur pilier e traon an ilis, ha troet ous an aoter vras. Neus fors an amzer a vije, g'hao pe ere'li, avel pe gurán, Mari a vije ato d'ar mellez poent o vont d'an ilis, nemet chomet e vijet divizatoc'h eb digeri an or. Er goán tremenet, nebeut araoc ma varvas, ar c'hloc'her o velet pegen teo oa cuezet an ere'li en noz, hac o c'houzout mad giziou Mari, a redas da gerc'hat eur bal evit ober hent d'ar vaouez graz, oajet neuze a bevar ugent vloas. Aben ma oa deut en dro, Mari Abivin a ioa o pedi en iliz, hag oc'h ober compagnenez da Zoue.

Ne ket brao beza eb fival en eun ilis goullo diou heur araoc an deiz, pa vez ar goán en he iena. Mari ne ree van eus ar ienien, evel pa ne vije ket bet gret gant eskern ha kie evel ar re all. Va unan em beus gwelet pa echue ar goán, ar c'hroc'hen fraillet var he daouarn ; eur vech em beus lavaret dezi : er goán-ma, mervad, Mari, ho-peus bet riu meur a dro. — Nan zur, emezi, n'em

beus ket cavet tam ebet an amzer euz er hloa-ma. Daoulmet hac antef-guzet e doug eur pilier, Mari ne zea ket achano nemet pa vije eun oferen bennac oifiren, neuze e leze he c'hador, hac e zee adren an dud all var ben he daoulin var ar mein. Kement oferen a vije lavaret en ilis, kement ofic a vije gret. Mari a heulie peb tra. Pa deue corfou maro d'an ilis, a zee e qichen ar c'heler var lerc'h ar re a ioa e kaon, ha ne vije casset d'an douar na paour na pinyidic, n'en devije bet he que sicour pedennou ar vaouez santel. Chom a ree eta en ilis epad ar mintin? Ia, betec unnee heur ; neuze a zee d'ar ger evit kemeret he lein ; ne veze ket hir an dalez rac en despet d'an dachen he devoa, hac a ice a bez couls lavaret e douar ar paour, ne gemere d'he fred nemet eur qichen avalon douar gant eur banne laer. Ne blije ket memez dezi aza iod, rac evel ma lavaraz eun dervez, eur boued daleus oc. An Aotrou Mear, pehini dre he c'hreg a zo niz dezi, a lavare din n'ens ket peb he deus digoret eur vech ar c'hoir e pehini edo ar par tatez ; hac o velet e zoa calz anezo dija o nevez e lavaraz. Ah ! ca, tintin, Mari, red eo deoc'h kementize kemeret eur boued rac hussoc'h. Mari, lenteet da genta o velet dilezet ar bini en ree, a respontas ket laouen ha ma veze ato : ar re-ze a zo gwelloc'h eget na sonjit, ha me a gav mad anezo.

Evel a velit, paour lavaraz he veze ar pred evit eur vaouez coz a ioa bet en ilis var yun ouспен e buc'h heur amzer, hac ato var he daoulin, nemet eun antermant pe eun oferen bred bennac a vije ; rac pa veze neus fors pelec'h e touez tud all, a ree ato eveltho.

Chetu aze dija eur mintinvez burzudus, rac piou a garfe ober kement all eur vech ebken? mad, ne velit c'hoas nemet eun anter eus an devez.

(Eur pennad-all divizatoc'h). P. KERSMOY, beleg.

LIZIRI DA DUD, DIVAR AR MEAZ.
(PEMPET LIZER).

Da Vadalen Penn-shan, greg Iannig ar c'hemenell. Ravezo, Doue, hinnigbet, va mearc'h keas, pa zee guir e tistroes out-han e kreis da anken hag e tistees ive onz da vignounnet koz. Ne deuan ket q'her c'bridi helles, da greski da c'hac'har ha da nec'hamanchou dre goumsou kriz ha c'huero ; an hexelen koumsou ze el leac'h serra ar goulou, a vije he dighori a nevez. Hoghen ne ma ket mui ar mare da hirvondi, va an amzer dremet ; ne ma ket mui ar poent da huandic, va bues fall da iannik na var ar maleur e peus bet oc'h he ghemeret ; ar pezh a dlees da ober brema eo, le eun he gant kourach enn hent e peus kemeret ; ha ma fellid d'id peurachui mad an hent-se er stad a biesb delez, selaou va alou hag en em arkod ouz va breac'h. C'hoant bras e peus a leveres, va mearc'h haour, da bellaat dious da c'hoas ; e kreis da hoagion ne gaves netra gue loc h eghet dilezel ar malc'urus a c'hoall

gass ac'hanout, eghet en em denna n'eus fors peleac'h gant da vugale nag e vije red d'id goude-ze mont da glask eun tamik bara euz an eil dor d'heben.

Ah! Madalen baour, esperout a res-ta kaout ar plas-sik-se e pehini e vev e peoc'h gant da vugaligou pell dious da bried? Mæs n'ouzes-te ket penaus, var an dou-ar-ma, n'eus plass ebet evit eur c'hreg dispartiet dious he goas?

Eur plac'h yaouang a hell heb danjer beva koz e ty e zad; eur c'hreg a hell beva henoret e ty he fried; eun intanvez a vezo diouallet mad dre he buez devot ha dre ar guel euz he c'haon; mæs ar vaoues a ziles he zy hag he goas, e peleac'h e kavo-hi eun doen sur evit he zilvidighez? Piou he divenno a eneb an dud libertin, hag a eneb teodadou an amezeien? Piou, memes, a roi d'hezi eun ty hag eur guele? Eun doen sur evit ar c'hreg se, me c'hoar vad, eo ty he zad hag he mam: Ia, enn ty-ze, pehini ne deo mui he hini hag e pehini ne hell mui gourc'hemenn, enn ty-ze a lavaran, eur vaoues di-vorzet a hell c'hoas beva e peoc'h ha sevel mad he bu-gale; mæs te, Madalen, ne gavi ket eun hevelep konso-lasion e ty da gherent, rag ar gherent-ze n'o deus ket c'hoas ankounac'heat ar boan a rejos d'heo o timezi da lannig enn despet d'ho bolonte ha n'o deus hirio evid-out nemet ienien. Rak-se 'ta e renki en em loja enn eul lochen vihan bennag e pehini n'helli ket padout pell da baëa da c'houel-Mikeal ha da veva da vugale gant an neubeu a c'hounezi o vont da zervicha; ah! neuze e vel peghen c'huero eo bara an aluzen: ouспен, matreze an tad a fello d'hean derc'hel gant-han ar botred, ha neuze pa vo desket d'heo bemde kaout kassoni ouz ho mam, petra devint-hi da vea? Kristenien fall ha peulliou-tavarn; ha ma ho dalc'hes, dre voneur, enn da gichen, ne renki-te ket, abred pe zivezad, lavaret d'heo perak ne deu mui ho zad var dro an ty ha dre-ze ne zeski-te ket d'heo milliga an hini a dleont da garet dre ar pevare gourc'hemenn a Zoue....

Ha da bried maleürus, petra deui-hen da vea pell diouz-it? E peleac'h e klasko ar pez a gave a ziaraog enn da gichen? Affer he zilvidighez a dle da denerat muioc'h eghet na zonjes: rag, enn despet d'he c'hoall vuez, lannik zo ato da bried ha tad da vugale. Doughen a rit ar memez hano, ha m'hen dilezes, ha ma teu gou-de-ze, dre eun taol fall bennak, da vea kasset dirag al lez-varn ha da vea dastumet er galleou, pebes dizhenor evid-out hag evit da vugale? Pebes poan evid-out pa renki lavaret: « Ma karjeu bea choumet gant-han, ar maleur-ze ne vije ket bet digouezet. »....

Suppozomp hebken e varvo al lounker-ze e foss an hent bras, krevet gant he gorvad; petra lavari, pa resevi ar c'helou-ze? Da zaoulagad hag hi a jomo heb daëlou pa zonji enn da garante tremenet evit da bried, pa zonji e llo ato eur c'hreg kristen bea e kichen he goas eghis he eal gardien hag e renko respount euz he ene dirak Done?

Gouzout a ran penaus da lannig a zo diskennet izel-izel; gouzout a ran he oll historiou; gouzout a ran penaus enn de-all, goude bea evet betek koueza, ec'h en em lakeas

da c'hoari c'hartou hag e kollas eno an arc'hant a ioa c'hoas da c'hounid hag he zillad memes; gouzout a ran e oue lakeat enn noas gant he gamaladed hag e tistroas d'ar ghear fuloret bras hag e reas d'as ler paëa c'huek an dichans hen doa bet enn-davarn; anaout a ran kemen-se oll; rag antronos vintin e velis da gorf brevet ha da vizach brondiet Gonskoude, Madalen, red eo anzao hen deus c'hoas an den kris-se eun tamik kaloun hag eur spes karante bennag evid he vugale; ispisial evit ar yaouanka; kridi a ran eta ne de ket c'hoas da bried ken kaled hag ar mean, na ken ten hag ar skorn; esperout a ran ive e c'helles memes he c'hounid en eur he ghe-meret dre ar c'hostez mad....

En em laka 'ta, Madalen, da labourat evit chench ka-loun da c'hoas; stign diraz-han lassou ar batiantet hag an dousder pere o deus dija tappet meur a loën gouez; pa zistroio lannik d'ar ghear, mezo dall, ha prest da skoi pe da c'hourdrous, dalc'h prenet mad da c'hinou, ha ne lavar grig; ispisial, pas eur c'hlem, pas eur rebech, pas an distera koums dipitus! Gant eun den mezo n'eus rezoun vad ebet. Grea eghis Mari an ty-all pehini, pa deu he goas d'ar ghear, leun he gov, a bourchass d'hean he zouben ar rous, a en em laka enn he guele hag a ra an neus da gousket ha roc'had. Rak-se, Madalen, pa c'hourdrouzo lannik, ne gaves ket d'hean pouill; pa skoi, ne c'halves ket an amezeien, ne ghemeres ket treujou ar valaën ha ne lammes ket d'he vleö eghis eur c'hass pe eur gaouen. Ma tigoues d'hean koueza e, toull an nor, ne vountes ket an-hean er meas a daolion treid, ne gasses ket an-hean da gousket d'ar c'hraou; kement-se hen lakaffe goassoc'h e fulor hag a raffe occasion d'ar vugale da ober goas euz ho zad; mæs, ma n'hell ket bale, sikour an-hean da gherzet; hen laka enn he yelo, hag evessa out-han eghis oud eun den klan. Antronos vintin diskues d'hean da vugaligou o krena gant ho spount, ar planken eb bara hag ar ialc'h goullou. Grea er ghis-se, Madalen, hag araok tri mis e veli kals chen-chamant e bues da bried. Ped ispisial evit-han, ha desk d'as pugale ober da Zoue ar memes peden evid ho zad, rak kaloun ar mesvier eghis kaloun ar rouanet zo etre daouarn Doue.

Kelenn mad da vugaligou, rak pa vez fall an tad, ar vam a dle poania goassoc'h evit sevel ar vugale-ze her-ves Doue. Grea ive da oll bossubl evit en em unani gant da dad ha gant da vam; kers avechou d'ho zy ha mar de red en em daol d'ho zreid evit goulenn pardoun digant-ho; ne gredan ket e ve kriz avoualac'h ho c'ha-loun evit reüs d'id ar pardoun-ze; rak-se 'ta, Madalen, eun tamik kourach hag enn neubeudik bolonte vad! Eghis ma lavaren d'id guehall, n'out ket bet troumplet gant lannik, ha ma peus great eur faot bras o timizi d'hean, ne res ket eun eil faot kals brässoc'h oc'h en em zispartia diout-han pe o fizesperout euz he gon-version....

(Eur pennad-all eur vech-all.)

LEVR AL LABOURER.

Penaoz en em ghemer, evit lakaat eunn taol gwenan ebärz eur c'hest-nebez.

Gant pri-melen eo ret bevenni tro-war-dro.
 Holl ho kestou gwenan, goloet gant ploys-to.
 War bere ve leket moued teo ha pouner.
 Ha neuze na zoujint na glac na fall amzer.
 Ann heol gand he domder, an deuz treg'het ar goan.
 Ra lugern war ar bed eunn deiz a nevez-han.
 E veleur ar gwenan o kuitaat ho rusken.
 O sevel barz ann ear, ha goude o tisken.
 Guech o vont war ar bruk e lein ar menesiou,
 Guech war eur bod biban e goueled ar c'hoajou;
 O furcha pep bleuen, o suna pep boked,
 Pe o raza ann dour vit terri ho zec'hed.
 Goude-ze e tenont e goueled ho rusken
 Da wiri ho vuioù, pe d'ober ann diren.
 E berr e-creiz eunn deiz douc, ha tomm euz ann han,
 C'houi ho guelo o tont er-meaz kenti-kentan.
 O c'honesä a hep-tu, o c'hrounna ar rusken,
 O sevel barz ann ear, hevel ouz eur gouabren.
 Evesait out-ho, ha sonit ho trebez.
 Bete na vezint holl staghet ouz eur har gwez.
 Neuze hep coll amzer, claskit buan ho rusken;
 He froit gant geot glaz, pe gant delion derven:
 He zreizit gant diou groaz great gant bisier ivo,
 Glebit ann diabarz gant leaz douc tro-war-dro.
 Neuze n'em c'hrounint mad, kemerit manegou,
 Evit en em virout e-nep broud ho flemmou.
 Ar bec troet d'al lae, soun dindan ar grounnad,
 Savit huel ho rusken hag hejit ar bar coad;
 Neuze war eul lißer war ar ieot displeghet,
 C'houi lakai ho rusken evel hanter-savat.
 Coulskoude c'houi veillo war-n-ezho hed ann de
 Rac ma n'en em vouront enn ho rusken neve,
 E vint guelet o vont holl d'ann ti dilezet,
 Pe da glask er c'hoajou, eur goz wezen cleuzet.
 Pa vezo deut ann noz, kemerit ar rusken,
 Ha likit anezhi eëun war eur varlen
 A dle'n em asten, evid ober ervad,
 Tro-war-dro d'ar rusken eunn daou pe tri meudad.

Le Reliquaire N. B.

- Hano ar Zient evit ar Sizun-ma.**
- DILLUN 8 GOÛERE. — Santez Elizabeth, Intanvez.
 - DIMEURS 9. — Sant Goule'hen, Escop.
 - DIMERC'HER 10. — Ar seis Breur merzer.
 - DIZIOU 11. — Sant Thiviziau, Escop.
 - DIRGUENER 12. — Sant Ian Gualbert.
 - DISSADORN 13. — Sant Anaetlet, Pap ha Merzer.
 - DISSUL 14. — Pempet Sul goude ar Pantecost. — Sant Bonavantur, Escop, Cardinal ha Doctor euz an Ilis.

An Abostol hirio :
 Ho pidi a ran stard dirag Doue ha dirag Jesus-Christ a dle dont da varn ar re veö hag ar re varo, hag a deui

evel barner hag evel roue, ho pidi a ran da brezeg-comzou Doue. Dale hit da brezeg e pep leac'h hag e pep amzer kelennit, comzit brao, gouderouzi, na skuizit moñt-keleñ. Rag dont a rai eun amzer hag an dud ne allint mui gouzout eur guir guelennadurez, mes ioul a zavo ganth da silaou bandennon doctoret hag a brezago dezho ervez ho c'hoant. Standa a raint ho diouscarn oc'h avel fionez

hag ho digorint da zilaou rimadellon. Evidoc'h-hu ayad heñtit bepret, gouzavit ato pep skuizder, labourit evel eur guir avielet, gant an oll deventou ouz ho carg. Beñt reiz en dibr hag en avañt, gant an oll deventou ouz ho carg. Evidon-me so echu va amzer an maro so tost din Brezelekeat mad em eus digouezet ouz e penava beach d'ar feiz em eus dalc'het mad. Nem eus mui da ober nemet receo ar gurunen a so oc'h a gontoz, hag a vezo roet din d'an dervez bras gant hor zalver, ar barner lea; ha ne ket enken dinme, mes ive da guement him a gar he zonediguez.

Eul lizer Sant Paul d'he ziskibl Timothee, iv. 1. G. M.

Scrifa a rer euz a Rom en deus hon Tan Santel ar Pap digueneret en he balez vardro e hñec'h-hañ balec' Great en deus dezho, e latin, eur brezeguen ar deventou an dud a iliz en amzeriou-ma.

An dud a vor a rafe vad dezho gouzout ez eus kaset er beg pella euz a enez Dussal er penad d'hean heol, eun drompill hag a zougant anseñt destimantenn. Pa vez brumachen, an drompill-ze a zoug hepenantren, ha pa vez sioul an amzer e roud da glevet ouz ho var ar mor.

Lavaret a rer e vezo lezet da zont d'ar guar, ar c'henta a vis gouere, ar zoudardet euz ar c'hlas 1861.

Bep sizun e velan er c'hazetennoù a gomz euz al la-bour douar, alioù ar re vella roet d'an dud diavar meaz. Goassa so eo an alioù-ze, text an dara-ynia, ne oufant he-za heñtit nemet gant eun tiec pinvidic, hannag, pe gant eur bourc'his, ha ne lacafe labourat, nemet eul liors, pe eur jardin. Evit skuert hirio e lennao e fell dezho e tene pep tiec da laza an oll brenvet glaz (les chenilles) en he zouaron, hag e c'houlennont zoken ma ve contragnet an oll labourerien d'hean ober.

Kementse a zo mad, epmar ebet, na evela lavaren bremaic, dian hini ne labour nemet eul liors ne eun jar-din eleac'h ma c'hell c'huillat pep grezou, pep boden, peb meudad douar. Hogen penauz e c'halle ober ke-mentse an hini a labour tregont dervez arad pe ouспен? Eun dervez arad epken a rofe labour avoalc'h da dud eun tieguez, ha c'hoas. Setu perak ne lapan ket an anter euz an amzer an alioù-ze e Feiz-ha-Breiz, dre ma c'houzon ervad e ve poan gollet din ho merca.

An dud e carg euz a gear Kemper, a so o c'houlc'h ma rai ar c'hirri tan eun ean (une station) e parrez Sant Iyy etre Kemper ha Rosporden. Kementse a rafe vad d'ar

barrez-ze ha d'ar parrezion divar dro. Rosporden so pemp leo ha kart dioc'h Kemper, ha n'eus ket marteze, var an hent houarn oll, keit pennad hent da ober ep ean.

Ervez ar gazetenn *Le Monde*, e cals Keriou a Frans ez oa sonch da lacat oc'h an tiez goulaou alumet an nao varnugient a viz Even, da noz, evit dre eno kemeret perz er gouel bras celebret en dervez-ze e Rom.

E kichen Marseil ez eus eur chapel devot d'ar Verchez. An eskibien hag an veleien so eat dre eno da Rom, a so bet oll e pelerinach er chapel. Tost da gant oferen so bet lavaret enhi er memes devez. Setu petra lavar eur gazetenn euz a Varseil.

Ar 26 euz ar mis, hon Tad Santel ar Pap a dlie ober eur brezeguen d'an Eskeb so eat da Rom euz a bevar c'horn ar bed. An Eskibien so en em glevet evit respont dezhan dre scrit, ha pep bro e deus choazet eun escop bennag d'en em garga a guementse en hano ar re all. Eskibien Frans o deus choazet escop Orlean, arc'hescop Cambre, ar c'hardinal arc'hescop Bezançon, hag ar c'hardinal arc'hescop Rouan.

Er sizun dremenet e costez Paris en em glemet euz ar glao, hag e c'houlennet bete pegucit e padje ar glaoier-se ep eana. Kementse a ziskuez n'eo ket henvet an amzer eno oc'h an hini on eus-ni ama, rag ama abaoue eun nebeut sizunvezion an amzer zo bete re zeac'h. E costez an anternos-ta d'ar Frans ez euz aoun na rafe ar glebor droug d'an eost, hag e costez ar c'hreisdreiz eleac'h m'emaor brema oc'h costi eo dister an eost, hag e tamallont kementse d'ar re a zee'hor. E tu ar c'hreisdreiz eleac'h guerza ed evel a reat kent e vezo red prena. Gouscoude eo guelleat marc'had an ed eno, dre ma teu ed euz ar broiou all. Setu petra lavar *Gazeten ar Meziou*.

Eur gazetenn euz ar c'hreisdreiz a lavar e tlefet touza an ejennet a ve sonch da larda. Evit gulet ha guir oa kementse, eme ar gazetenn-ze, eun tieg a lakeas daouzeg ejen da larda er memes craou. An daouzeg ejen-ze a voue choazet cavatala ma c'hellet a vent, a oad hag e pep guiz. An tieg a lakeas touza c'huec'h euz an ejennet hag a lezas c'huec'h all ep ho zouza. Gonde ma voant bet pemp miz o larda, pephini euz an ejennet touzet a boueze, etre kig ha soa, pevar lur ha pevarugient muioc'h evit pephini euz ar re a voa lezet ho bleo gantho.

Ervez lod, al loenet labour, ejennet ha kezeg, a c'hounit ivez, a jom iac'hoc'h pa vezont touzet.

Kement ma so mad e tu ar c'hreisdreiz; mes er c'har-ter-ma?

D'ar re a lard ejennet e ve ober an essa.

Mad e ve marteze digas da zouch d'an dud divar ar meaz ne dleont ket mont da zoucha dindan ar guez pa vez arne ha curun. Gulet a ran adarre er sizun-ma var ar c'hazetennou hano euz a dud lod lazet, lod badaouet epken gant ar gurun coezet varnezho a hed ar guez dindan pere e voant eat da zisc'hlavi.

Er foar diveza e Roazon, ervez cazetennou ar gear-ze ar c'hezeg hag ar zaout leaz a ioa guelleat ho marc'had; an ejennet avad hag ar zaout lard a zalc'he da vont ker ker ha kent.

An Aotrou X... so eur prener euz ar re vella, mes eur paer fall eo. Evel ma zeo pinvidic braz ha ma car calz an taolennou, en deus carguet he di a daolennou euz ar re gaera hag, ec'h ellit cridi, ive euz ar re guera. Hoguen n'eus nemeur euz an taolennou-ze hag a ve paet.

N'eus ket pell, eul liver, pe mar kirit, eur penter en doa guerzet dezhan diou daolen deg mil lur. An Aotrou X... en doa ho c'hasset gantha, en eur lavaret ho faeje kenta ma c'heje. Al liver en doa izom arc'hant, hag a ieas diou pe deir guech da c'houlenn ar pez a ioa dlet dezhan. Mes an Aotrou X... n'en deveze morse guenneg.

Al liver a ieas neuze da gaout den a afer an Aotrou X... Hema a lavaraz dezhan en doa etre he zaouarn arc'hant avoalc'h d'an Aotrou X... mes ne alle ho rei nemet eur billet en divije abers ar perc'hen. Setu al liver adarre-ta da di an Aotrou X... Hoguen eleac'h goulenn arc'hant en dro-ma, e lavaraz en doa en he di diou pe deir daolen euz ar re gaera: Ne ket falvezet din ho guerza, emezhan, ken n'am bije clevet ganeoc'h ha c'hoant o pije d'ho c'haout. — Mont a rin d'ho gulet, eme an Aotrou X... ha mar plijont din, me ho freno, hag a baeo an oll var eun dro.

Antronoz ez eas da di al liver a voa o chom er pempet astach euz a eun ti. Hema ne c'hortoze ken. Pa voue deut tre an Aotrou X... er gambr, al liver a ra eun dro en alc'huez, hag a lavar:

— Brema em paot dioc'htu pe ez eot var ar ru dre ar prenest!

— N'em eus ket a arc'hant.

— Grit eur billet din da vont da di ho ten a afer:

Ar billet a voue great; al liver a ieas dioc'htu da guer-c'hat he zeg mil lur, hag a zalc'haz an Aotrou X... dindan an alc'hoez keit ha ma voue oc'h ober he dro. Pa voue distro, hag he arc'hant gantha, hen lezas da vont kuit.

Setu penauz e tenner arc'hant digant ar baerien fall.

Gouscoude al liver o veza lavaret d'an Aotrou X... n'en divije bet biken ar galon d'he scleper var ar ru, hema a respontas: Mad! m'am bije gouezet, n'em boa ket ho paet c'hoas!

G. M.

PRIZ AN ED.

KEMPER. — 29 Even.		PONT-NABAT — 27 Even.	
Priz ar c'hant lur.		Priz ar c'hant lur.	
Guinis....	46 lur, 04 c.	Guinis....	45 lur, 98 c.
Segal....	43 lur, 24 c.	Segal....	41 lur, 46 c.
Eiz.....	9 lur, 48 c.	Eiz.....	40 lur, « c.
Ed-du....	8 lur, 74 c.	Ed-du....	8 lur, 96 c.
Kerc'h....	10 lur, 43 c.	Kerc'h....	9 lur, 63 c.
Avalou-douar	3 lur, « c.	Avalou-douar	4 lur, 75 c.

Ar Geran: A. E. ERANGA.

Kemper, moulet gand Ar. DE KANAL, Mouler Escopi.

FEIZ HA BREIZ,

KELOU A BEP BRO, HA KENTELIOU VAR BEP TRA,

DIGASSET BEP SUL

Da guement Christen a goms ar brezoune.

Eun Abonnamant d'ar Gazeten a goust:

- Evit eur bloas..... DAOU SCOUET.
- Evit c'huec'h miz..... EUR SCOUET.
- Evit tri miz..... C'HUEC'H REAL.
- Eur gazetenn ebken..... DAOU VENNEG.

Ar bacamant a dle beza great araog caout ar gazetenn.

ALIOU.

Ar scrijoun a ve c'hoant da lacat er gazetenn a dleer da adressi oll d'an Aotrou MORVAN, Beleg e Kemper.

Ar pacamant a dleer da adressi d'an Aotrou SALUN, ebken. An abonnamant a guementse e ti an Aotrou SALUN, librer, ru Kereon, e Kemper.

KEMPER, 13 Gouere 1867.

Ne velomp ket o defe er bloa-ma an dud difeiz criet kementa enep processionou ar Zacramant, petra bennag ma ze o bet ar processionou-ze caeroe h evit biscoas. Credabl eo o deus sonjet e collent ho foan ha ne allent ket ober aoun d'ar gristenien. Hoguen ha chomet int-hi da haonez? Hag eant int-hi da ober brezel da Jesus-Christ ha d'he ilis? Oh nan! Ar pez ne reont ket dre ar c'hazetennou, e clasont hen ober dre seridou all; ar pez ne gredont ket ober dirag an oll, her greont dre guz, dre laer: ar pez allont ket ober dre ners, e clasont hen ober dre ijin, dre finesse. Lod an ilis Santel var an douar eo gulet ato eur rum bennag oc'h ober ar brezel dezhi, ato eur goal var-amzer bennag o steki onthi ep gallout gouscoude morse he distruja nag he discar. Bag Sant Per a vezo ato eur goal avet bennag o c'hoeza varnezhi, mes morse ne dai da skei var ar c'herreg, morse ne dai d'ar goulet, rag bez'e deuz evit sturier Jesus-Christ he unan, hag ezen ar Speret-Santel a c'hoez en he gouelio. Enebourien an ilis so hirio souezet hag estlmet; chom a reont evel pa vent abafet, mantret ha saouzaet oll. Ha perag? E guironez, ha ne deus ket a beadra da vantri pe da gounnari o velet eun dra ker burzuduz evel a dremen hirio dirag hon daoulagad? Petra? Hi o deuz implijet kement beveg a ellent da gaout o clase discar an ilis Santel, ha setu hi seder ha souennoc'h en he za evit biscoas! Stlapet o deuz onthi pri, bouillen, a bep seurt loudouriach o clase he sclabeza pe he c'hail-lara, ha setu hi eun dudi he gulet o luguerni skedusoc'h evit biscoas! Clasket o deus mouga he sclerijen, ha biscoaz ar sclerijen-ze n'oa bet gulet gaoc'h o para, morse ar sclerijen-ze n'oa en em skignet hirroc'h dre ar bed! Livirit ama d.n, ha ne deo ket dipituz evit an dud difeiz beza collet kement a boan?

Ia, morse n'oa bet an ilis Santel skedusoc'h evit en dervezion-ma. Morse n'oa bet guir: h lavaret anezhi ar pez a lavare ar profet Isai guechall o comzous Jeruzalem:

«Savit, Jeruzalem, da lavaret en ilis Doue, savit, ha bezit sclear! Digorit frang ho toriou. Ha ne glevit-hu ket trouz ar c'harroziou o tont gant an hent? Ha ne glevit-hu ket trouz ar c'houagou moroc'h conenna dindan al listri? Ha ne glevit-hu ket mouez ho pugale o tont euz a bell, euz an douar braz hag euz an enezi, evit en em deleur etre ho tivrec'h?»

Hoguen morse n'oa bet gulet moroc'h a vugale d'an ilis o tont d'he briata evit so deit er sizunvezion-ma. Lavaret a eller zoken eo deut he oll bugale d'en em deleur etre he divrec'h, rag deut int e personach ho eskibien, hag ez eus deut da Rom eskibien euz an douar braz hag euz an enezi, euz ar sae-heol hag euz ar c'hoz-heol, euz ar c'hreisdreiz hag euz an anternos, euz ar broiou tom hag euz ar broiou ten, euz a guement carter a zo tud o chom enho var an douar. Gulet a reat er sizunvezion-ma lod o treuzi broiou gouez, gouelec'hiou, lod o treuzi meneziou, lod o treuzi ar mor braz, hag oll oant troet varzu ar memes leac'h, varzu ilis Rom, varzu vikel Jesus-Christ.

Evelse gant pebez levenez e tigor an ilis Santel he dorio. D'ar vugale-ze a deu d'he c'haout! Pebez levenez evit an Tad Santel gulet evelse en eun doare bennag he oll vugale en em zestumet en dro dezhan! Gant pebez calon, gant pebez carantez e rei he vennoz d'an oll eskibien-ze da gas pephini d'he garter, pephini d'he escopi, pephini d'ar vanden denvet roet dezhan da ren gant ar c'henta pastor!

Sonjal a ra din clevet Pii Nao, laouen evel an heol pe kentoc'h daelou a joa o redeg a hed he zivoc'h, o c'helver hag o lavaret: Peleac'h emaoe'h-hu, va bugale, c'hui pere so hiskinet, bresset dindan an treid, abalamour ma talc'hit mad d'ar guir feiz, d'ar guir iliz? Hag e kichen treid an Tad Santel e elevan mouez eun escopi o respont: Setu ni ama! Hag an escop-ze so bet hanluet en he unan, hag a zoug ar mercou euz ar poanion en deus gouzanvet. Caout a ra din clevet ab Pap o c'houlenn ivez: Peleac'h emaoe'h-hu, va bugale, c'hui bugale nevez-

ganet d'an ilis, nevez deut euz ar stad a c'houzeri ma voac'h enha, d'an anaoudeguez euz ar goir Doue? Hag e clevan o respont eskibien, missionerien goz torret dindan ar beac'h euz ho labourou, tud hag a ve lavaret o defe chenchet guenn kement o deus bet da c'houzaon dindan an amzer er broiou-ze dishenvel dioc'h an hini ma voant ganet enhi; ho c'hlevan o respont: Setu ni ama! Sonjal a ra din c'hoas clevet Pii Nao o c'houlen: Peleac'h ema va bugale, ar re a jom er broiou-ze eleac'h ma c'hellont heuilla ho relijion da dele her mad d'an ilis Santel ep beza hiskinet, hag a beleac'h e tigassont din ken aliez mercou euz ho c'harantez? Hag ama ne ket eskibien epken, mes beleien, mes christenien fidel a gantehou a respont: Setu ni ama! Roit deomp ho pennoz, Tad Santel! Ha daelou ar pastor mad a red puill o clevet he oll denvet o respont d'he vouez!

Setu ama eur pennad euz eul lizer serifet gant eur beleg euz a Rom da eur mignon dezhan: Nag a nevezentjou am bezo-me da gonta pa zin ac'hann, mes ne din nemet divezata ma c'hellin. Ho taou vreur zouavet a so iac'h hag o cortoz e Rom. Oh! deut eta! ma c'houfac'h pebez dudi eo beza e Rom! Ama emao er guer; ne ket tud estren oar ama. Eskibien, Cardinalet, ho tignemer gant eur vadelez a dad, hag ar Pap ta! Ah! va mignon, teir guech em euz he velet en eun dervez, ha teir guech em eus gouelet. Ker braz eo ar blijadur am eus bet oc'h he velet, m'am bije roet nguent vloaz euz va buez evit he gaout. Ar Pap ne ket eun den epken eo; eun den var an douar ne all ket caout eun drem evelse. An drem-ze zo euz an Env; ar zell-ze ho tev, ho talc'h a za, a ra aoun deoc'h. Sellet em euz outhan hag eo bet red din soubla va daoulagad, hag an daelou so deut da c'hlibia va divoc'h. Dridal a ra va c'halon pa gomzan deoc'h euz ar Pap. Lavaret a rafen a volonte vad va *Nunc dimittis*.....

Dre urz ar Pap eo laket da ziskuez, var unan euz an aoteriou en ilis Sant Per, ar gador var behini eo bet azezet Sant Per he unan hag ar habet all oll var he lere'h beteg an trivac'hvet cantvet. Ar gador-ze oa bet eador-zoug ar senator Pudens. Abaoue ar Pab Alexandr Seiz, ar gador-ze a viret en eur chapel er penn huella euz an ilis.

Procession ar zacrament, e Rom, a zo bet caer dreist kement a oufet da lavaret. Cals eskibien, deut euz a bell, o deus kemeret perz enhi. Eur gazeten zo dirag va daoulagad hag a laca teir eneben evit merca epken ar breuriezou hag ar bandennoù Eskeb a ioa er procession. — Lod euz an Eskibien eat da Rom o deus casset arc'hant d'an Tad Santel; bez'ez euz ive deut re all hag a so ker paour ma zeo red d'ar Pap ober an dispign evitho; hag ez eus tremen cant euz an eskibien baour-ze deut euz ar missionou.

E procession ar Zacrament, e Rom ez eus contet tri c'hant antercant, etre Cardinalet, Arc'heskeb hag Eskeb. Daoulagad an oll a bare var Eskibien bro Sao-Heol, o

velet ho ornanchou skeduz hag ho baro hir. E Rom ta ez eus brema Eskibien euz ar penn pella euz ar bed. Eur beleg o comz oc'h eun Escob euz ar C'hanalla, a lavare dezhan en doa bet calongre o tout evelse, hag hefi coz, euz ha gweit all da Rom. — Oh! Pene an Escob, evit ar boan am eus me bet ne ket bras. N'em eus great nemet trenzi ar mor en eul lestr tan, ha goudeze trenzi an Europ dre an hent houarn. Setu aze avad emezhan, en eur ziskuez eun Escob all, setu aze hag a dat ar troan comz euz ar veach en deus great. Henez so euz ar tu d'an anteroz d'an Americ, hag en deus great pevar c'hant leo: a dreus broiou goude ar aoug caout nag hent na guenod.

Ar zouavet eo a ren ar veleien dre Rom evit diskuez dezho an traou caer so enhi. Eur beleg, o tispartia dioc'h eur zouav en doa he renet evelse dre gear, a c'houateas rei dezhan *guerz ar butun*. Ar zouav, ep arieza, a guemeraz ar pezig arc'hant. Hoguen dioc'htu ez a d'he ialc'h hag e tenn eur *billet bank*. — « Aotrou Person, emezhan, kemerit an dra-ze evit ho peorien. »

Ar zouav-ze e voa an Aotrou Cont L*** Eur beleg all a gave dezhan e comze caer ar zouav a ioa oc'h he ren, hag a lavaras dezhan: — Asa, camarad, c'hui a dlie beza cloareg! — Cloareg oun, eme eguile. — Mes penaus, Cloareg? — Douguet em eus soudanen, ha mar pli gant Doue lacat ep dale ar Pap da ellout tremen ep-d'omp, em eus sonch mad da visca va zoudanen adarre dioc'htu.

An Tad Santel ar Pap en eur rei urs d'he vistr da ober he c'hallout evit ma c'hele ar re a ia da Rom mont di az ha mare had mad, a lavare dezhan: List da zont e ker an dud hag an traou a vezo gantho. Dou dra so gouscoude hag a zifennan onzoc'h crenn da lezel da zont e kear; ar c'holera hag ar rochedou ruz; da lavaret eo ar forbanet pe al laeron.

Paris. — Da zul ar Pantecost ez eus bet eun tan goal e Pariz e kichen ti c'hoarezet vihan ar beorien. An eulf a goueze a dorchadou var an ti-ze eleac'h ne deus nemet tud coz, tud mac hagnet, tud elan ha ne allent ket kemeret an teac'h. Me ho les da zonzal pebez strafuil a zavaz en ho zonez. Ar c'hoarezet vihan a rede euz an eil cambr d'eben o clase dienezezi an dud keiz hag ho lacat da gaout fizians e Doue. Dre c'hrañ an Env, an tan ne ket deut larcoc'h evit mogueriou ar chapel. Antronoz, person Sant Lauraus a deuas da chapel ar c'hoarezet vihan da lavaret an oferen evit *trugarecat Doue*.

D'ar c'huezeg a viz even, Aotrou Escob Orlean en deus lavaret, e Rom, en ilis *Santez Mari en wall d'ar pont*, an oferen evit zouavet ar Pap. An oll zouavet, na petra-ta a voa en oferen dindan ho armoù! Goude an oferen eu deus comzet outho evelen: — Va skuisder a vir na ellan lavaret calz a dra deoc'h; ar peza gavan diez. Gouscoude ne fell ket din disken

dioc'h an aoter-ma ep-lavaret deoc'h peguement en em gavan eurus da lavaret an oferen en ho touez ha da lezel ganeoc'h eur guer evit m'o pezo souch anezhan. An guer-ze setu hen ama. Bez'ez eo guer Sapt. Paol, ar galon vraz-ze, hag e c'h ellan he lavaret ive, ar zoudart calongre-ze da Jesus-Christ; State, chomit en ho sa, chomit ferm ha stard en ho santimanchou, ep ho feiz, en afer da behini oc'h en em voestlet. Bez'e vezo ato, henor ho iaouankiz-hag ho puez oll. — Nag hen so caer ha santel an afer, ma zoc'h en em voestlet dezhi!... Ra deui ar re o deus feiz ha ners caon, ha ne onzont ket petra da ober euz ho iaouankiz, ra deui tud euz a Frans, euz a Spagn, euz an Irland, euz ar Pologn ker reuzendic zoken, euz a guement bro catolig a zo, da greski an niver ac'hanoc'h. *State!* Dale hit ato mad!

Ar re so er guevridiguez savet e Paris evit rei courach d'an dud da ober vad d'ho nessa a ioa en em restumet en dez all evit rei priziou d'ar re o doa gounezet. Eun dra a dremenaz eno hag a dal ar boan comz anezhan.

Fransez Conan, grenadier en eil rejimant euz ar c'hard, goude ma voa echu he gonje, en em c'hreas soudant adarre, evit gallout beva he vam ne voa mui goest da c'houmt he bouet. Gant al leve a denne divar an arc'hant en doa bet evit mont d'ar zervich, hag he damig pae ec'h elle rei bara d'he vam, hag e tiouere he unan pep plijadur. O velet-se, ar guevridiguez er bloas 1865 a roas dezhan eur vedalen a heur hag eul *leorig* da gas d'he vam, hag al leorig-ze a roe guir dezhi da gaout sicour euz an tenzor. Hoguen pa zigouezaz al leorig beteg ar vam guez, houma a voa maro.

Conan en divije gallet dele her al leorig: mes ne reas ket. He gas a reas d'ar guevridiguez, o c'houlen ma vije roet da eur zoudart hag en devije ive he vam da vaga. Cavet e voue dioc'htu eur zouav euz ar c'hard, hauvet Fransez Marchal. Hema en deuz ive eur vam hag a so coz, paour ha clanvidik. He map a gas dezhi he damig pae hag an anter eus he vouet. Ouspen so ar vam-ze clan e deuz izom da chench lienach aliez, ha ne ell ket paea eur gouezereze. Ar map a ia d'ar ster da voalc'hi he dillad, petra bennag ma vez goapeat ha ma vez c'hoarzet alies dezhan.

Ar map mad-ze ta eo en devezo leorig Conan. Falvezet eo bet lakat Fransez Conan da rei he unan he leorig da Fransez Marchal, hag evelse int bet galvet ho daou d'ar guevridiguez.

Ar vedalen a roomp deoc'h a deu diganeomp-ni, eme an hini so e penn ar guevridiguez o comz oc'h Marchal; al leorig avad, ho camarad eo hen ro deoc'h. — Neuze e voue lavaret dezhan pebez taol a galon vad a rea Conan.

Marchal a deue an daelou en he zaoulagad. — Ho *trugarecat*, Aotronez, emezhan, mil bennos Doue deoc'h. Rei a rit din sicour, hag ouspen... eur mignon. Hag e lamas gant Conan d'he vriata.

Kement a ioa eno a ioa, tenereet ho c'halon, ha ne

vouient ket behini a dlient da veuli-muia, pe an hini a ziscoueze kement a galon vad o rei da eun all ar peza elle da zerc he gantha he unan, pe an hini a voue diskuez ker calongre he anaoudeguez vad.

Tennet euz ar gazeten *Revue pour Tous*.

Haiti. — An Aotrou Destard du Casqueris o deud da Rom. Araog m'oa e hem laket en hent an hini so eun e penn ar c'hoarnamanu serifet dezhan. — Gihanoc'h eus da greski ners calongre Eskibien hag ar veleien o deus prometet sicour deoc'h, ha da rei da anaout d'an Tad Santel eun stad vad an t'houm e Haiti. Ho peack eta! Aotrou Arc'hescop, a so evidomp eur mere nevez a so euz ho carantez evit iliz Haiti. — Lavaret d'an Tad Santel ar Pap oc'h eus lezet e Haiti christenien galoc mad o fidel; on eus bet o evithan ar brassa respect; ez omp douguet meur bet evit h in o velet he d'rouillon hag an ners calongre gant behini ho gouzaon, o velet peguement e car he vugale baour a Haiti. Ha ne alle ket diskuez ideomp guelloc'h peguement hor c'haraguet oc'h ho choaz, Aotrou Arc'hescop, da veza hor c'henta pastor.

Ar gazeten *l'Union* a lavar ez eus meneg euz eur sened euz an iliz oll; ne ket brema, mes divezatoc'h. Ervez eul lizer serifet a Rom d'an *Union*, hon Tad Santel ar Pap a dle araog ma zai an eskibien d'outhan, discipria dezho he zouch var guementse.

Ervez cazetennou Rom, hon Tad Santel ar Pap a ia bep eu amzer da visita an hospitalou, evit ghelet ha ne vanc netra d'ar re gian. Eno her gueler o vont euz an eil goele d'eguile, o c'houlen digant pep den clan petra en deuz izom; o lavaret eur goms vad bennag da bep hini, o tremen evelse beteg eun heur anter, div heur dioc'htu e mesc ar re gian. Setu aze hag a ziskuez calong vras Pii Nao.

Ouspen-ze evel ma zeo kereat ar bevans e Rom dre an niver braz a dud a ia di brema, hon Tad Santel a so dalc'h mad he zouch gant ar beorien, hag an dud a reng izel, hag ober a ra he c'hallont evit miret n'o deffe die-nez. Goue'hemennet ep deus ma vije, epad miz even, roet an anter muioc'h a bac d'ar re euz he zervicheien so bihan ho gouidiguez.

MERZERIEU AR JAPON.

(C'huoc'het pennad)

Er bloas 1613 an Impalaer a c'halvas pevarzeg dijentil christen d'he lez, hag a c'houe hemennas dezho lezel al lezen gristen ha stouet dirag an fals doueou. Evel ma talc'hent mad d'ho relijion a voue lamet ho madou digantho hag e vouent harluet. Daou floc'h christen, o velet n'oa ket hano anezho, a c'houennas mont d'an harlu gant ho mistri. Guelet e vouent oll gant ho gragnez hag ho bugale, o vale dre ar gouelec'hion hag ar c'hoarou, ep k'n's ou na bevans nemet ar peza zigase dezho prov dan Doue.

Daoulagad an oll a bare var Eskibien bro Sao-Heol, o

O velet an hiskin-ze, eun demezel euz al lez hag a ioa caret cals gant an Impalaer, evit tenna varnezhi grasou an Env, a voestlas chom bep ret guerc'hez. An demezel-ze a voa euz a Gorec, hag eur-vec'h a speret, ouspen ma voa euz eur renc huel. O veza deut da veza pried Jesus-Christ, e sante en he c'halon eun ners guest da drec'h kement a alje stourm outli. An Impalaer a reas he oll c'halout evit he gounit, mes morse ne ellas dont abenn anezhi. Er fin he lakeaz etre daouarn eur vanden soudardet pere he c'hassaz euz an enezez d'eben gant diou vignonez dezhi Lucia ha Clara, hag e lezaz he unan en eun enez cleac'h n'oa nemet eur pesketaer paour bentag o chom e coz lochenou. Ploan e devoe o caout eun toul evit mont euz a zindan an amzer, hag e tremenaz eno daou-ugnent vloaz o veva evel eun al. Eun dra epken a rea nec'h dezhi, hag oa defot na doa bet lakel d'ar maro : hoguen an Tad Pasio, a gompagnunez Jesus o veza scrifet dezhi ec'h anaveze an iliz evit merzerien meur a hini ha n'oant bet nemet harluet, ne devoe mui a veloni gant kementse, hag e vezaz e peoc'h.

Bez'e voue ive merzerien neuze e Rouantelez Arima. Daou vreur, Thomaz ha Mathiaz, ha Martha ho mam, hag ho bugale, Jakez ha Just a voue dibennet an 28 a vis Guenver 1613. Ar 27 a Ebrel, ar Roue a lakeas laza en ho guelic daou vreur jaouanc dezhan. Ar 5 a viz Here ar Roue a gondaonas d'an tan tri zijentil hag ho zud : eiz dant etrezho; Adrien, ha Jannet he c'hreg, Mari Madalen he vere'h e doa en em voestlet da jom ato guerc'hez, ha Jakez he vap pehini n'en doa nemet daouzeg vloas. Leon Paroix da ha Martha he bried, Leon Taquendomi hag he vap Paul, den iaouang a zeis vloas varnugent. Pa loue en em skignel ar brud euz ar varnedigeez-ze vap ar meuz, e voue guelel o tont etrezeg kear beteg ugent mil gristen d'en em guinigen da vont d'ar verzerinti gantho. Kementse a scoas kement calonou an oll, ma velont tud euz a lez ar Roue, o doa nac'het ar feiz evit phour d'ar prius, oc'h ober pinijen dirag an oll, hag o c'houlen beza ive merzeriet. Hag evel ne roet ket dezho ho goulen, ez ejont anezho ho unan en harlu gant oll dud ho zi.

D'ar seiz a viz Here, dioc'h ar minin e tenjot da lenn da gonsessor et Jesus-Christ ar zetans ho c'hondaone da veza devet. Braz e voue ho levenez. Eun dra gouscoude a vanke dezho, caout ar c'hras da gommunia; hag ar c'hras-ze o devoe ive. Pa voue deut an heur dezho da vont da dachen ar verzerinti, e voue guelel eun dra ha n'oa ket bet guelel marteze abaone ar penn kenta euz an ilis; eur guir dromph a voue great d'an eis merzer-ma.

An ugent mil gristen deut divar ar meaz a deuz e kear gant eun urz ar c'haera, eur c'harlantez var henn peplini anezho hag ho chapelod en ho dorn, Christenien kear a voa ive var dro ugent mil all anezho. pep a c'harlantez gantho ive var ho fenn ha pep a billet coar en ho dorn, ha pa ziblassaz an eis merzer, en em lakejont oll a reng a bep-tu dezho evit ho heuilla. Ar verzerien a ioa er c'hriz. N'oant ket liamet, mes ar yourrevien hag eun nebeut soudardet a rea var ho lere'h. Eur vandenig dister

e voant e kichen daou-ugnent mil gristen, ma vije fal-vezet d'ar re-ma tenna ar verzerien euz a dre ho daouarn. Hoguen ne ket ar c'hoant-ze eo o devoa. Mar o devoa eur glac har bennag, oa defaut beza merzeriet evelldho. Ar re a ioa da dosta d'ar verzerien, a gomze outlo, ha ne voa ken hanp gantho nemet euz an heur vad o doa da rei ho buez evit Jesus-Christ. Lod all a zave ho daouarn etrezeg an Env evit goulen dezho ar c'hras hag an ners da zerc'hel mad. An darn-vuia a veule. D'ue, a gane canticou, hag ar c'harter oll a dregarne gant mouez an daou-ugnent mil gristen-ze.

Pa vouent digouezet var an dachen, an daou-ugnent mil gristen en em rencas ker buhan hag eur vanden-zoudardet desket mad. Ar verzerien kerkent ha ma veljont ar peullou ous pere e thient beza staguet, a redas d'ho briata. Eis pent a ioa plantet en donar, ha var an eis pent ze oa savet eun doare coatach hag enn doare toen, ar pez a rea eun doare cardi var greiz an dachen a zirag prenecher palez ar Roue.

Ep ad ma reat ar pourchaz evit ar verzerinti, Leon a zavas var an doare toen tolet a dreus var ar peullon, hag ac'hano e comzaz evelen d'an nuyer braz-ze a dud deut da zellet : « Va breudeur, guelit pegument a nerz a ro ar feiz da dud dister evelldomp ni. O velet pourchaz evidomp eun tourmant ker criz, ez omp carguet a levenez hag ec'h esperomp e cresco c'hoaz hon levenez pa vezimp e creiz an tan. Ar re eta n'int ket christenien a dle sonjal pe guer braz eo santelez ha vertuz eur Religion a zao ac'hanomp kement azoc'h an dud all. Evidoc'h-hu, hor breudeur e Jesus-Christ, na strauillit ket o velet an tan oc'h hon devi. An tan ne rar nemet hon lacat da c'honnit buanoc'h ar gurunen; pe kentoc'h ar c'hras eo a rai deomp trec'hi nerz an tan, hag eur momet bennag a boan a rai deomp caout eur c'hoar hag eun euruset hag a bado ato. »

D'ar c'homzon-ze ar gristenien en em lakeas da stracal ho daouarn, ha neuze Leon a ziskennaz, a ieas d'en em lacat en he za e tal he beul, ha dioc'htu e voue staguet outhan.

Ar re all a ioa staguet araog, ha kerkent e voue lakel an tan er c'hoat tri zoatad dioc'h ar verzerien. Eur c'hristen a ioa en em silet tost d'an tan, en em lakeas neuze da brezeg dezho gant cals a ners, ha da ziskuez dezho eur baniel a ioa varnezhi skeuden hor Zalver siag oc'h ar pilier evelldho; layaret a rea dezho d'erc'hel ho daoulagad var ar skenden-ze a ziskueze dezho en doa eun Deu great evitho ar pez a reant brema evithan.

An tan a voa neuze o cregui, hag e saxas eur vogueden ken teo, ma vouet eur pennad ne velet netra. Dre ma creske an tan ar mogued a vianee, ha souden e voue gallet guelel ar verzerien e creiz an tantad. Nicun ne falgalonas; nicun ne loscraz eur glemaden, hag an oll a jome sebezet o sellet outho; den ne lavare eur guer. Pa voa maro lod anezho, hag ar re all dare da vervel, e tiguezas daou dra hag a grescas c'hoaz an estlam.

Map Adrien, Jakezig, a voa devet al liamou lakel d'he staga, hag ar buguel kez n'en doa bet nemeur a zroug

le hoaz, evit doare. Her guelel a rejeur o redez e creiz an tan flam, a dreuz ar glaou ruz. Cridi a rejeur ne alle mui gouzadon ar c'hriz euz an tan, hag e claske tec'het ket. « Chal a rejot outhan kemeret courach. Hoguen ne ket stee'het eo a glasket ar buguel, mes mont da gaout he vam. En em lacat a reaz d'he briata evit mervel etre he divrec'h. Ar vam vad-ze a zonet a voa maro; hoguen neuze e savaz c'hoaz eun tam buez eun. Ancounac haat a reaz ho loan he unan evit rei courach d'he map da zerc'hel mad beteg ar maro. Souden ar potrig a goeaz e kichen he zreid, hag hi a goeaz ive dioc'htu varnezhan, hag e varchoit ho daou er meez amzer.

Merc'h ar vam galonec-ze, c'hoar ar merzer bihan, ar verec'hez Madalen, oajet a naouteg vloaz, a ioa c'hoas caeroc'h da velet evit he mam hag he breur. Ne jome nemethi beo, ha petra bennag ma voa an tan crog eun a bep tu, he guelel c'hoas leun a vuez hag a ners. Chom a rea ep finval; he daoulagad savet etrezeg an Env. Lavaret e vije ne zante ket he foan, e voa eat er meaz anezhi he unan hag e vele dija ar barados digor. Bars ar fin he guelel o testum glaou tan gant he daou zorn, hag oc'h ho lacat var he fenn evel eur garlantez pe eur gurunen. O velet ez ea ep dale da vervel e felle dezhi, red ha ma ve, lacat eur gurunen var he fenn da vont da savet he lied divin. Gouscoude an tan he deve nebeut ha nebeut; hoguen dre ma zea he ners digant he c'horf, he ene a vije lavaret a grea keit ha ma chomas buez eun. Elin e riscalas goustadig dioc'h he feul, e c'hourvezaz ep freuz ebet var ar glaou ruz evel pa vije bet oc'h em asten var eur guele soupl, hag e rentaz he liamou diveza.

Neuze ar zoudardet a ioa e kelc'h en dro d'an tan, ne vouent mui mistri, ha ne eljont ket miret oc'h ar gristenien da gas gantho coriou ar verzerien; ar c'hofoa a voue cavet en ho fez, ha n'oa c'huez ebet gantho. Cas a rejont gantho beteg ar glaou var bere oa bet astennet ar c'horf santel-ze, hag ar peullou ous pere e voant bet stag.

Eorl ar Verec'hez Mari Madalen a voue douguet da guenta da Voure Couzura, gant tud ar voure haden-ze; hoguen great e voue dezho he zigas en dro, hag ar c'horf a voue lakel oll en archedou great gant coat prisiuz, ha lakel voulous diabarz enho. Neuze e vouent caset da Nagazaki ha lakel etre daouarn Escop ar Japon, gant eur scrip divarbenn ho merzerinti sinet gant eun niver braz a deston. An Escop a reas renta d'ar relegon-ze an oll honorion a elle da lacat renta dezho. Goudeze e cassas da Rom relegou ar verzerien hag an oll scrijou great divarbenn ho merzerinti.

Ar Pap Urban eiz, pa ziscleriaz eurus Santez Mari-Madalen Pazzi, a gasas da leanezet Carmez, da Florans, eur groaz e pelfin lavare en doa lakel eun tam euz ar guir groaz, leun tam euz a relegou Mari-Madalen Pazzi, hag ive eun tam euz a relegou Mari-Madalen merzeriet er Japon dre an tan. Evelse ar Pap Urban eiz en doa en eun doare bennag, discleriet eurus ar verec'hez-ma euz ar Japon. G. M.

MARI ABIVIN

Pa deve ar c'hloc'heur d'an ilis evit simon d'Angelus da grez dezhi, Mari a veze ive deuet er dro evit ober en eil pennad eus he dervez, heurel o ois, ho fionnad kenta. Azalec creis-deiz betek pemb-heure ne deadket ac'hano nemet galyet e vije d'argen evel da livrin divezatoc'h. Da henn heur e zec da zibri edarne evit he c'hoan eur guhen palates; hac e teue d'an ilis outha chat all da lavaret he fedennou arag mont da gousket. Petra gawe da sonjal keit amzer en ilis, a lavaro lod? Rac meur a gristen a zo nec'het o clask gouzout petra da ober ep na heun deus lavaret ar pedennou a c'hoar. Ha petra gawe da sonjal dezhi ha ne he gambri an den drsket, pehini euzet gant al levriou bras a zo en dro deza na vel ha na gley petra eus an dialevez, na c'hoar mui zoken eur mont da zibri he bried pe da gousket. Eun den diskiant a lavare, o velet ar seurt tud ze o labouret, penaos ho deus collet ho len, na ne c'hoizout ket a dachadou e maint et bed-ma, eun all pehini na anavez ens an Aotrou Doue nemet he hano, a lavaro kement all divar ben ar Zeut. Couls an eil hac eule, an den desket hac an den saule, a zo kemeret ho speret oll gant ar pez a zo dipazo; ma cav ar c'henta re ve an amzer o sonjal e comzou tud all evelthan, perac e teufe an eil da inoui o sonjal e comzou Doue?

Lakit eul levr eus ar pe vella dirag aundon ab desca durez. E velet a roec'h o trei al levr a heb tu evel eun tam keunend, sellet a rei gant plijadur eus ar golor mar deo pinvidic, ous al lizereprou memes mar distramoulet mad, pe livet caer. Livrit deza chom eun devez e kichen dirag al levr-ze digor; gwelloc'h e ve gantho anout neus fors pelec'h var dro ar park-vec'h. Rou-hen gouscoude da eun den desket, he-ma marteze a zeprou an or var he gambri gant aoun na deuo eun all da zibri he speret divar al levr heun deus cavet. Mad ha eun ene yen dirag eun aoter hac en eun ilis, livrit dija levr e caloun Doue; al levr-ze a zo savet clos evitho ne c'hoar ket lenn ennan, hac inoui a rei buhan lakit dirazan gouscoude eun ene dibrad dions ar bed-ma pehini he deus desket gant Doue lenn ar pez na vel ket daoulagad ar c'horf, penaos a gav deoc'h e teufe da inoui dirag ar pez a gar dreist neb tra kentoc'h eget eun doctor dirag he levriou?

Da viana, a lavaro lod all ma made he savet e penaos e pade he c'horf, da veza keit amzer var heun he daoulin. Respount a rin da genta gant Sant Augustin; Pa rei eur dra gant carantez, neus ket a boan a be mac deus poant e carer ar boan-ze. Evelato e reulvan anzaog em deus cavet ato burzudus ober kement all, ha chomiac'ha ha laquen, maget ha livet mad; rac nebeut a vije bet cavet en dro da daoulin ar voure hizen, o gajit ispijal d'ar oad he devoa nerz, tec'het ha lion mad evel Mari Abivin. C'hoant em deus da gredi penaos Doue, en eur rei seler rjen d'he speret, a roe ive souten d'he c'horf. Red eo

An Aotronez : Goujon vik. v. ha kenta ch.	5	«
— Leseleuc vik. v. ha chaloni.	20	«
— Nedelec chaloni.....	15	«
— La Lande de Calan chaloni.	20	«
— Guenn-Kerneison chaloni..	20	«
— Lamark person ar gatedral.	10	«
— Moelo chaloni a honor....	5	«
— Peron prof. er seminer....	5	«
— Thaeron prof. er seminer..	2	50
— Salaun ec. er seminer....	5	«
— Kersimon prof. er seminer.	5	«
— Billon prof. er seminer....	5	«
— Traon prof. er seminer....	5	«
— G. M.....	5	«
— Y. Pouliquen p. Penmarc'h.	10	«
TOTAL.....	177	50 c.

Calz euz ar re so bet er redadegou kezeg e Kemper, n'o deus ket cavet e vijent caer. An amzer ken nebeut n'oa ket euz ar guella.

Seminer bihan Pont-Croaz en deus savet pemp cant lur evit lacat eur zouav e servich hon Tad Santel ar Pap.

Eun nebeut tud vad euz a Landerne so en em glevet evit sevel ive etrezho pemp cant lur da lacat eur zouav e servich ar Pap.

Eur vaonez a Vipavaz e deus roet ive cant lur da zicour lacat eur Zouav e servich an Tad Santel.

Ar vanden bardonerien bet e Jeruzalem da c'houlieu Pasc, a so distroet d'ar gnar ep darvoud, iac'h ha gren. Eur vanden all a dle diblas euz a Varseil da Jeruzalem etre ar pemzeg hag ar c'huec'h varnuguent a viz Eost.

E lod euz an tiez scol e veler adarre ar scolerien o toueret ho friziu, o c'houten ma vezo casset d'hon Tad Santel ar Pap an arc'hant a ioa sonch da lacat da brena prizioù dezho.

Ar pevare a viz Eost, retred galleg evit ar merc'hed e Lesaven.

Ervez eur gazetenn euz a Douloz, ar veleien diguemeret gant hon Tad Santel ar Pap ar pemp varnuguent a viz Even, a ioa anezho etre deg ha daouzeg mil. Hon Tad Santel en deus roet dezho oll ar c'hallout da rei en he hano ar venediction gant induljans plenier pa vezint distro d'ho farrezioù, mes eur vech epken.

En douar santel an dienez a ia bemdez var grese. Ar c'hilleien-raden so en em laket da ober distruch, ar Meziou vardro menez Thabor so crignet oll gantho. Ne vezo tam eost dre eno. An edon a ioa caer ha doarect mad, mes hirio emaint lounket oll.

Ar veleien eat da Rom, o deus bet pep a vedalen digant hon Tad Santel ar Pap.

En Exposition ez eus daou zen gonez digaset en ar stadou-unanet, euz an Americ. An oll a gom a za da zellet

oc'h an daou zen gouez-ze a zo eur scrij ho gulet gant ar plun so gantho var ho fenn hag ar rillennou plantet en ho difronn, ho c'broc'hen brizellet, hag an ear anezho eun euz he velet ken diforch int.

Ar Zouavet, e Rom, so carguet da ziuol nos dez cador Sant Per laket, dre urz ar Pap, da ziskuez d'an oll gristenien fidel.

Brema n'eus ken hano nemet a redadegou. Ar mare so, hag evelse ez eus redadeg bemdez eun tu hennag, er c'hæriou braz, er c'hæriou bihan, er bourkou ha zoken e bourkou dister. En eur guæric pe eur bourg, e departamant ar Charant, e vez ive redadeg bep bloaz, hag ar re o deus laket ar redadeg-ze, o deuz en em glevet etrezho evit lacat an arc'hant tennet euz ar redadeg-ze da brena levriou. Al levriou-ze so dalc'het en ti-kear, hag an nep a gar a ell mont d'ho lenn ha da denna frouez anezho, rag bez'emaint e servich an oll.

Ne gavan netra eno hag a rofe tro da zen da veza souezet, a leverot-hu. Nan sur, lenner, mes gortozit.

Er guæric-ze ne ket redadec kezeg eo a vez, mes redadeg ezen, hag evelse eno an ezen so carguet da zével peadra da rei descadurez d'an dud.

Setu petra lavar eur gazetenn a zepartamant ar Charant. G. M.

PRIZ AN ED.

KEMPER. — 6 Gouere.		PONT-NABAT. — 4 Gouere.	
<i>Priz ar c'hant lur.</i>		<i>Priz ar c'hant lur.</i>	
Guinis....	15 lur, 76 c.	Guinis....	15 lur, 94 c.
Segal....	11 lur, 61 c.	Segal....	10 lur, 83 c.
Eiz.....	9 lur, 64 c.	Eiz.....	10 lur, « c.
Ed-du....	7 lur, 86 c.	Ed-du....	8 lur, 75 c.
Kerc'h....	9 lur, 33 c.	Kerc'h....	9 lur, 50 c.
Avalou-douar	4 lur, 25 c.	Avalou-douar	4 lur, 25 c.

HENT HOUARN.

Da be heur e tiblas hag e tigouez ar c'hirri tán.

O VONT A GASTELLIN VARZU NAONET.

	kenta trein	eil trein.	trede trein.	1° cl. e paer	2° cl. e paer	3° cl. e paer
Castellin..	6 h 40	10 h. m.	4 20	» f. »	» f. »	» f. »
Kemper...	7 10	10 55	5 19	3 45	2 60	1 90
Kemperle..	8 33	12 13	6 43	8 50	6 40	4 70
Lorient...	9 9	1 2	7 24	10 75	8 05	5 90
Redon....	» »	» »	» »	22 85	17 15	12 55
Savenec...	» »	5 30	» »	27 55	20 65	15 15
Naonet...	» »	8 51	» »	31 90	23 95	17 55

O TONT EUS AN NAONET VARZU CASTELLIN.

	kenta trein.	eil trein.	trede trein.
Naonet.....	» »	6 h. 10m.	« «
Savenec....	» »	7 30	« «
Redon.....	» »	8 29	« «
Lorient....	7 h. 49m.	14 50n.	5 47n.
Kemperle..	8 32	12 49	6 42
Kemper....	9 39	1 59	8 2
Castellin..	10 47	3 »	9 13

Ar Gerant: AR. DE KERANGAL.

Kemper, moulet gant AR. DE KERANGAL, Moulet an Escopi.

FEIZ HA BREIZ,

KELOU A BEP BRO, HA KENTELIOU VAR BEP TRA,

DIGASSET BEP SUL

Da guement Christen a goms ar brezouec.

Eun Abonnement d'ar Gazeten a goust.

Evit eur bloas.....	DAOU SCOUET.
Evit c'huec'h miz.....	EUR SCOUET.
Evit tri miz.....	C'HUEC'H REAL.
Eur gazetenn ebken.....	DAOU YENNEC.

Ar bacamant a dle beza great araog caout ar gazetenn.

ALIQU.

Ar scrijoun a ve c'hoant da lacat er gazetenn a dleer da adressi oll d'an Aotrou MORVAN, Beleg e Kemper.

Ar pacamanchou a dleer da adressi d'an Aotrou SALAUN, ebken. An abonamant a guemerer e ti an Aotrou SALAUN, librer, ru Kereon, e Kemper.

KEMPER, 20 Gouere 1867.

Prezeguen hon Tad Santel ar Pap Pii nao d'an Eskibien, e Rom.

HOR BREUDEUR HENORUS,

« E creiz an trubuillou c'huero a guez varnomp, ez eo evidomp eur joa, eul levenez dispar ho kulet adarre en hor c'hiechen ha gallout comz ouzoc'h oll var eun dro. »

« E guirionez, deut oc'h d'ar guær-ma euz a guement bro so var an douar. Eur sin epken euz ar c'hoant or boa d'ho kulet so bet avoalc'h evit ho lacat da zont a galon vad en hent. C'hui, a ra kement a honor d'ar relijion, a so galvet da guemeret perz en hor zourci euz an ilis, c'hui, en amzeriou trubuillus-ma, ne c'houlennit ken nemet hor siconr da zifen an ilis catolic ha labourat da zavetei an eneoù; ne glaskit nemet dousat ar c'huervder euz hon nec'hamanchou, ha diskuez deomp muioc'h mui ho fidelite, ho calon vad, hag ho sentidiguez e kenver cador Sant Per. »

« Braz eo eta hon levenez oc'h ho kulet, hag an testeni-ma a roit deomp hirio euz ho carantez, a zigas da zonzh deomp eus a galz a desteniou all oc'h eus roet deomp araog hirio paravia an eil d'eguil gant ar brassa unvaniez. Gouzout a reomp n'o deus ket gallet nag ar boan nag an diezamanchou ma en em gavac'h enho miret ouzoc'h da rei deomp an testeniou-ze. »

Evelse ive ar zonzh-ze ker c'hoeg ha ken dous, a so eat ken doun en hor c'halon hag a dle chom enhi bepret, ar zonzh-ze eo a ra d'hon anaoudeguez vad ha d'hor c'harantez beza beoc'h ha creoc'hevit biscoaz, hag a ra deomp santout an izom d'hen discleria a vouez huel dirag an oll evit rei deoc'h eun herrez ha mercou sclerroc'h anezho. »

« Hoguen mar deo eul laouenidiguez evidomp teleur evelse eur zell var an amzer dremenet, e vezo eas deoc'h compren, hor breudeur henorus, pebez carantez a veri

hirio en hor c'halon, pa-on euz adarre an heur vad d'ho kulet en dro deomp, da velet pegement hor c'harit, pegement ez oc'h douguet evidomp, e hui pere, var eur c'hoant epken euz hor peuz, a zo deut d'hor c'haout eus ar c'harterioù pella euz ar bed christen.

« A dra zur ne allemp c'hoantat netra muioc'h, netra ne alle ober deomp muioc'h a blijadur eguet en em gaout en ho touez, evit ma tennimp oll frouez euz an assemblema, eus ar solaniteou-ma e pere kement so dirag hon claoulagad a lavar, deomp ne deus nemet eun ilis an ilis catolic, a so unan epken ha ne ell ket bezardiscaret, pe tra a goms deomp ama euz ar zonzh a dleer da goust hag euz ar c'hloar zo o tifen hag o kenderc'hel an iliz unioze. Ia, pep tra a gomz euz an iliz unan-ze dre behini, evel dre eur c'han, e red var ar gristenien bodezonoù ha grasou ar Speret-Santel, oc'h ho lacat da rei skuderoù a feiz hag a garantez bete lacat souezet ar bed oll. »

« Hano a zo brema, hor breudeur henorus, da lacat e niver ar zant servicherien caloneg d'an ilis, pere o deuz, an darvuia anezho, gouezet curunen ar verzerinti. Rbet o deuz a volonte vad ho buez, lod evit souten eo Cador Sant Per ar penn, ar c'heuz euz ar virionez, hag euz an unvaniez, lod evit souten ne deus nemet eur feiz, ha ne jench ket; lod all evit distrei oc'h an ilis catolic, e coezet en errol. Evelse e velomp ama scler hag en eun doare burzudus petra fell d'ar brovidans divin pa ziskuez deomp an dud-ze o terc hel mad d'an unvaniez catolic hag o c'hounit ar victon, dress en amzer ma rei eur brezel ar goassa d'an ilis catolic ha da c'hallout his Rom. »

« Ouspen-ze, hano so da zolaniza, gant ar brassa lit, ar memor euz an dervez eurus ma o deus an daou abostol Sant Per ha Sant Paul, brema ez eus trivac'h cant vloas, gouzanvet ar verzerinti er guær-ma, ha siellet gant ho goad ar c'fire-ma euz an unvaniez catolic behini ne vezo morse distrujet. »

« Petra a ellemp-ni ta, hor breudeur henorus, da c'hoantat muioc'h, petra a zerec muioc'h oc'h triomp ar verzerien-ze, eguet lacat da luguerni, en henorioù a ren-

tomp dezho, kement so agaera en ilis catelc? Petra sojustoc'h eguet ho kueleto tont da greski, oc'h en em gaout ama varel leac'h, al levezenez ma euz a driomph prinsed an Ebestel, triumph hag en deus ar bed oll catolic guir da guemeret perz enha? petra dereatoc'h eguet ho tevotion hag ho levezenez o tont da renta skedusoc'h c'hoaz ar gouelhou solanel-ma? »

« Hoguen an devotion hag an unvaniez stard-ze gant Cador Sant Per ne zere ket epken oc'h an amzeriou-ma hag oc'h santimanchou ho calon; Bez'ez eo c'hoas talvoudeg braz evit hon lacat da denna anezhi frouez ar re vella, ken evit habascaat d'an dud diseiz, ken evit mad ar gristenien fidel hag oc'h hini. Rd eo e teufe enebourien ar relijion da anaout, oc'h he guelet, pebez nerz ha pebez huez so en ilis catolic oc'h pehini o deuz bepret kement a gassoni; red eo e tescfent peguen diskiant int pa damallont anezhi da veza ep ners ha dizere dioc'h he amzer; red eo e tescfent peguen diot int pa lakeont ho fizians enho ho unan, pa gredont e teuint a benn euz ho mennoziou fallagr; red eo e c'houfent ne dorrer ket liamou ker cre evel ar re en deus destumet Jesus-Christ var ar mean ma zeo diazezet he ilis varpezh. Red eo ta e velle an oll hirio sclerroc'h evit biscoas, ne deus liam cre na striz ebet etre an eneou, nemet eleac'h m'ema speret Doue epken o ren var an oll: ha ma teu an dud da zilezel Done ha da zisprijout gallont he ilis, ne gavont ket an eurusdet a glascont dre hent ar pec'het, hag en em strincon, siouas! en dizunvaniez, en arneu, en dizeur. »

« Mar sonjomp e mad ar guir gristenien fidel, petra a ell beza guelloc'h evit ho zilvidiguez, petra a ell beza guelloc'h evit lacat da greski ho zentidiguez evidomp hag evit Cador Sant Per, eguet guelet pe guen douguet eo ho fastoret da guenderc'hel guirion hag unvaniez an ilis catolic? eguet guelet ar bastored-ze o treuzi an douar hag ar mor, ep sellet oc'h an diezamant euz ar veach, evit redeg etrezeg Rom, etrezeg Cador Sant Per, evit honori, en hor personach dister, an hini a zalc'h leac'h Sant Per, vikel Jesus-Christ var an donar? »

« Kementse a roi dezho da anaout, guelloc'h evit an oll brezeguenon, pegument a respet hag a zentidiguez a dleont d'an hini ma en deus lavaret Jesus-Christ dezhan, e personach Sant Per: *Messait va oahet, messait va denved*, an hini so roet dezhan, dre ar c'homzou-ze, ar garg hag ar c'hallout var an ilis oll. »

« Kementse a rai cals vad deoc'h oc'h unan ive, hor breudeur honoruz, evit ober ho carg. E guirionez, seul startoc'h ma vezo liamou ho feiz, seul vui ma viot douguet ha ma ho pezo carantez evit ar mean var behini eo diazezet an ilis, sul vui a nerz hag a c'hallout o pezo evit ober ho carg, evit trec'hi an oll enebourien. Oll histor an iliz hen desc d'eoc'h. »

« Kementse, ep mar, eo a roe Jesus-Christ da anaout pa lavare, en eur rei da Ber ar garg da zouten ha da great he vreudeur: *Pedet em euz evidout evit na vanco ket da feiz, evit, pa vezi distroet, ma creai da vreudeur*. Hor Zalver, eme Sant Leon, a guemer sourci euz a Ber

dreist ar re all, a bed evithan, en he bart he unan, evit ma vije suroc'h ar re all pa na vije ket trec'het an hini a zo en ho fenn. Da Ber eta eo roet an ners; ar fermder so roet dezhan gant Jesus-Christ evit ma he roi d'an Ebestel all. »

« Ragze on euz ato credet ne alle ket an ners-ze roet da Ber en he bart he unan, mancout d'en em scuilla varnoc'h bevech ma tostajac'h ous Per, beo ato er re a zalc'h leac'h dezhan, bevech zoken ma tostajac'h oc'h ar gear-ma bet ruziet gant goad Prins an Ebestel. Morse zoken n'on deus douelet na zave euz ar bez-ze eleac'h m'ema relegou Sant Per hag eleac'h ma zint henoret gant ar bed oll, eun ners euzet, eur vertus dispar hag a ro d'ar bastored a zional denvet Jesus-Christ, santimanchou hael ha calon da ober traou braz, ners da drec'hi an enebourien ha da viret outho da zistruja unvaniez an ilis catolic. »

« Perag, hor breudeur honoruz, e elascfempni he guzat? Emaomp pell amzer zo var dachen ar vrezel o c'houren evit difen ar relijion hag ar justis a enep tud fallagr ha dibenn. Ar stourmad a so ker criz, a bad keit, ma n'eus ket re euz a ners an oll vrezelecaerien a vanden evit chom ep beza trec'het. Evidompni, o vrezelecat evit an iliz, evit frankiz ha guirion hor c'harg, ar guenta euz ar c'hargou, on eus gallet bete vrema, dre c'bras Doue oll galloudeg, en em denna euz ar brassa danjerou. »

« Gouscoude tolet ha distolet omp gant ar goal avelou hag ar c'houagou dirollet. N'on eus ket aoun rag pense dre m'ema J.-C. ato ganeomp ha n'hon les ket da gaout aoun; eur boan dreist on euz avad o velet kement a guelennadureziou nevez ha divalo, kement a dorfejou, kement a draou direiz great gant an dud diseiz a enep an ilis santel catolic. Ho dianzavet hag ho c'hondaonet on eus kentoc'h, hag hirio a nevez, evit ober hor c'harg evel ma tleomp, ho c'hondaonomp hag ho dianzavomp dirazoc'h oll. »

« Brema gouscoude, e creiz ar blijadur on euz, oc'h ho kueleto, ne fell ket deomp digas da zouch euz an trubuilhou hag an nec'hamanchou a deu da vantri ha da c'houlia dalc'h mad hor c'halon. Guelloc'h eo ganeomp ho douguen var an aoter eleac'h ma on eus ken aliez scuillet hor pedennou hag hon daelou; discuil, dizelei a raimp a nevez, en hor pedennou, an oll boaniou-ze e ker'hen an tad a drugarez, hag en em dolimp gant ar brassa fizians, etre divrec'h an hini a voar savetei he iliz hag he gloria, a rento lealdet d'ar re a c'houzaon evit ar virionez, hag a varno en devez ma plijo gantha. »

« Evel kent, hor breudeur honoruz, ho furnez a lavar deoc'h pe guen talvoudeg eo, evit delc'her penn d'an dud diseiz ha pareo gouliou an iliz, e veac'h a unan ganeomp ha gant cador Sant Per; hag e tenfe an unvaniez-ze da luguerni ha da c'hrianna mur oc'h vui bemdez. Ouspen so, ar garantez-ze evit an unvaniez catolic, pa vez stag oc'h an eneou, a fell dezhi en em skigna tro var dro evit mad ar re all, hag a dra zur n'ho lezo ket da baouez ken n'o pezo great oc'h oll gallout evit di-

gas d'ar memez unvaniez, d'an unvaniez paduz euz ar feiz, euz an esperans hag euz ar garantez, an oll veleien a so dindannoc'h hag an oll gristenien fidel a so en ho carg. »

« A dra sur ne oufe netra beza caeroc'h da velet dirag daoulagad an zelez ha dirag daoulagad an dud, eguet hor guelet er pelerinach a reomp eme euz an douar a harlu d'hor bro, o rei eur guir skeuden euz a belerinach an daouzeg tribu a Israel er veach a reant etrezeg an douar eurus prometet dezo. Bale a reant oll a vanden, ha pehini e doa he rener, pehini e doa he hano, ha pehini e doa eul leac'h da jom a za. Pep tiad tud a zente oc'h ho zadou, peb strol brezelourien oc'h ho ofiserien, ar vanden oll oc'h ar prins, ha gouscoude an oll guennou tud-ze ne reant nemet eur hobl a azeule ar memes Done, a bede e troad ar memez aoter; eur bopl epken a zaje d'ar memes lezennou, da eur beleg braz epken, Aaron, da eun den epken casset gant Doue, Moizes; eur bopl epken hag en doa ar memes guir da guemeret perz er vrezel ha da gaout he lod euz a frouez ar victor; eur bopl epken a veve dindan ar memes telton, a zebre ar memes bouet burzuduz, hag o devoa ioul da zigouezout oll er memes leac'h. »

« Gouzout mad a reomp e lakeot oc'h oll zourei da guendelc'her ato an unvaniez-ze; testeniou avoalc'h oc'h eus roet deomp a guementse. Bez' on euz evit goarant ho feiz hag ho vertuz a veler ato o luguerni hag o sevel dreist an oll danjerou; bez' on euz evit goarant ho prez santel da labourat evit savetei an eneou ha creski gloar Doue. Evit goarant on eus c'hoaz, hag ama ne jom moi douet ebet, ar beden dudius-ze a rea Jesus-Christ he unan d'he Dad Eternel araog he Bassion: *Crit, va Zad, emezham, ma vezint unan evel zomp unan c'hai ha me*. Ar beden-ze ne all ket chom ep beza silaouet. Evidompni, hor breudeur honoruz, netra ne ra kement a vad d'hor c'halon evel tenna euz oc'h unvaniez ar frouez guella hag eurussa a eller da denna evit an iliz oll. Abaone pell e voa en hor speret eur zouch hag a zo anavezet gant meur a hini euz hor breudeur honoruz, hag ec'h esperomp cas ar zouch-ze da benn kenta ma cavimp tro. Ar zouch-ze eo delc'her eur Sened (eur Concil) jeneral euz a oll Eskibien ar bed catolic. Eno e vezo clasket, gant sicour Doue, o lacat a unan hor poan hag hon aliou, ar remejou mad ha red da gemeret evit pareo clenvejou an iliz. »

« Ar fizians ar vrassa on euz e tevio, dre ar Sened-ze, sclerijen ar virionez catolic d'en em scuilla e creiz an denvlijen ma ema ar sperejou ehi, hag e teuint, gant gras Doue, da anaout guir hent ar zilvidiguez hag al lealdet. Er memez amzer an iliz, evel eun arme renket da vrezelecat, eun arme ha na ell ket beza trec'het, a raio penn da oll nerz he enebourien, ho zrec'ho, hag a lacat ren Jesus-Christ d'en em asten ha d'en em skigna var an douar. »

« Brema, evit ma vezo silaouet hor peden, evit ma tougo hor poan frouez aleiz a zilvidiguez etouez ar gristenien, savomp hon daoulagad etrezeg Doue, feunteun

a bep madelez hag a bep lealdet, e pehini e caf ar re a esper, kement sicour ha kement gras o duiz d'ho vev douguen frouez. »

« Pa zeo guir on euz evit avoalc'h kenevel he Dad Jesus-Christ Map Doue, ar beleg braz-ze n'ho zalc'h an Enn, hag a so ato beo evit beza antefou eme Done hini, hag a so o eun ganeomp bepret er zieraman euz he garantez, lakeomp, hor breudeur honoruz, lakeomp ar Zalver-ze evel eur sin var hor c'halon, nevel eur sin var hor breac'h, diaocassomp dalc'h mad hor pedennou var an aoter-ze eleac'h ma en deus Mestr ar c'bras ho unan savet an tron euz he drugarez, hag eleac'h ma e ho touz evit ho dizamma, kement hini so er boan hag a zo goal zammet. »

« Pedomp hen ta dalc'h mad, a greis calon, da denna he iliz euz a guen aliez a zientriou hag a zanterou, da re dezhi bouediguez ha peoc'h, hag ar victor var he enebourien. Pedomp ma roi deoc'h ha deomp evit gloar he hano, eun ners nevez, ma c'hentano en oll galonou an tan-ze en deus digaset var an douar, ha ma tiggasso dre he oll c'hallout, santimanchou mad da guement so en erro. »

« Ne oufac'h ket ober guir, hor breudeur honoruz, eguet lacat oc'h oll boan da greski etouez ar gristenien ma zoc'h carguet anezho, an anaout deguez euz hor Zalver Jesus-Christ, he deint d'he heno, da ho gaver, da dostat aliez outhan, Sacramant an Aoter. Ne ho ho blijio maoc'h deoc'h egnat labar ho stard da zerc'het beo e calonou ar gristenien tan ar garantez hag an anaout deguez vad evel ma chom beo nos deiz ar goulou dirag ar Zaerament. »

« Hag evit ma silaouo Doue guelloc'h hor pedennou, goulonnomp caloneg sicour, da guenta digant ar verc'hez Mam Doue, patron ebet ne boue beza kengallouduz hag hi, goudeze digant an ebestel Sant Paul ha Sant Paul a bere ez eomp da solaniza ar c'halon, euz an Enn, hag erfin digant an oll dud eurus so o ren eun pou gant Jesus-Christ, hag a denn dre he ledennou gasson Doue puill var an dud. »

« Erfin, hor breudeur honoruz, deoc'h ha d'an oll Eskibien euz an oll garterion catolic, kerconls ha d'an oll gristenien ma zoc'h carguet anezho, hag o deus roet hag a ro ato deomp kement a destenion euz ho c'harantez, deoc'h oll ha da bep unan ac'hanoc'h o reomp a greis calon hor benediction apostolic, hag e rekeromp evidoc'h peb eurusdet. »

Er sizun-ma, ar pezh ne deo ket souez, ar c'hazetennou christen ne gomzont nemet euz a Rom. Ne gavont ket a gomzou evit lavaret peguer caer eo bet ar gouelhou e menet eno, ha dreist oll gouel Pen. Ne gaver en histor e ve bet morse er gear-ze kement a eskibien. Evit ar veleien ne aller ket ho c'honta. Ar zouavet eat da zervicha ar Pap en em gal eno gant belejen ho farrez ha gant ho escop, hag oll emahint eno evel er gueur dindan daoulagad an hini a so tad an oll gristemon. »

Ervez eul lizer deut euz a Rom, hag ennet re zivezad

evit beza laket er gazetenn-ma er sizun dremenet, an Aotrou'n Escop a Guemper a ior digouezet e Rom iac'h ha dispoze hag hec'hed a guendalc'he mad abaoe ma voa en em gavet. Ar veleien eat euz an escopi-ma da Rom hag erruet eno en he araog, a ias a vanden, an Aotrou Arc'hescop Testardien ho fenn, d'he zigumeret d'an hent houarn; ar pezh a denereas meur bed ealon an Aotrou'n Escop.

D'he dro an Aotrou'n Escop en deus destumet Aotrou Arc'hescop Tahiti, ar veleien a escopi Kemper hag ive an ofisenien zouavet so eno euz ar vro-ma, evit kemeret eur pred bouet oc'h ar memes taol gantha. Evelse an Aotrou'n Escop en deus bet ar blijadur, e Rom, da zestum, evel eun tiad tud, he vugale en dro dezhan, ken beleien, hen ar re a rent servich d'an hini a abavezont oll evit ho zad ! Er pred dudius-ze, a dra sur, kemeret e kichen tron vikel Jesus-Christ, e c'hellent oll eridi beza er gear, ha credabl eo, ar re a voa enha, etouez an oll draou caer o devezo guelet eno epad ar gouelioù, netra ne vezo bet chomet dounoc'h en ho c'halon evit ar zouch euz an testi-ze a unvaniez etre an tad hag ar vugale, etre ar pastor hag an denvet roet dirag daoulagad ar c'henta pastor euz an iliz. G. M.

HISTOR ZANTEL

TENNET DIVAR LEVR ANN EKOD.

(SEITEKVED PENNAD).

Ann dour c'houero. — Ann daouzek feunteun. — Ar Mann.

Moizes a guitaaz gant Israel aochou ar Mor-ruz, hag ez ejont ac'hano e gouelec'h Sur. Hag e kerzjont tri devez ebarz er gouelec'h, ha ne gavent ket a zour.

Hag e tenjont enn eul leac'h hanvet Mara, hag e kavjont eno dour. Mes na ellent ket eva diouc'h an dour-ze, dre ma oa c'houero. Evit-se e oe roet d'al lec'h-se eun hano deraed, oc'h he c'hervel Mara, da lavarout eo c'houeryder.

Hag ar bobl a grozaz enep Moizes, o lavarout : petra a evimp-ni ?

Moizes a griaz var-zu ann Aotrou Doue, pehini a ziskouezaz d'ezhan eur seurt koat : ha pa oe taolet euz ar c'hoat-se enn dour, ann dour a zeuz dous. — (Ar c'hoat-se, eme Zant Aogustin, a oa eur skeuden euz a groaz hor Zalver. Ar pec'hed o veza taolet he vinim var ann holl draou krouet, koulz lavarout, ar vuez-ma a zo tenn ha leun a c'houeryder. Hoghen n'hon euz nemet sellet ouz ar groaz, hag e tiskenn ac'hano enn hon ene eun nerz celestiel pehini a zigas dous ar pezh a gave d'eomp a vije c'houero).

Diouc'h Mara, bugale Israel a zeuz da Elim, e peleac'h ez oa daouzek feunteun hag dek palmezen ha tri-ugent; hag e savjont ho c'hamp e kichen ann douriou.

Diouc'h Elim, pobl tud bugale Israel, a zeuz e gou-

elec'h Sin, pehini a zo etre Elim ha Sinai, eur miz goude ma oent eat er meaz euz ann Ejipt. Eno e oe goassoc'h krosmol enep Moizes hag Aaron. A bep tu ne gleyet nemet ar gaoz-ma : plijet gant Doue e vijemp maro dre zour ann Aotrou e bro ann Ejipt, pa oamp eno azezet e kichen kaoteriou leun a glik, ha bara d'eomp da zibri hor goualc'h. Perag hoc'h ens-hu digasset ac'haoump er gouelec'h-ma, evit lakaat ar bobl holl da vervel gant ann naon ?

Neuze ann Aotrou Doue a lavaraz da Voizes : Ma I rei a rinn d'ehoc'h, epad ho pech, eur glao bara euz ann env. Pep mintin ar bobl a zastumo ar pezh a vezo a-oualc'h evit eun dervez. Mes d'ar c'houec'hved devez e tastumint eun hanter muioc'h eghed ann deision all, evit he virout abenn antronoz pehini eo dez ar sabbat. Amproui a rinn er c'hiz-se ar bobl, da velout hag hen a gherzo em lezen, pe ne rei ket.

Ha Moizes hag Aaron a lavaraz da holl vugale Israel : enn abardaez-ma e ouiot en deuz ann Aotrou ho tennet euz ann Ejipt, ha n'ho lezo ket da vervel gant ann naon; ha var c'hoaz-vintin e velot gloar an Aotrou. Henoz ho pezo kik da zibri ha pep mintin ho pezo bara ho koualc'h. Ann aotrou Doue en deuz klevet ho krosmol eun he enep; rak ni, petra omp-ni evit ma kroszac'h enn hon enep. Ne ket enn hon enep-ni eo e sav ho krosmol, mes enep ann Aotrou. Epad ma komze Aaron ouz holl bobl bugale Israel e seljont etrezeg ar gouelec'h; ha setu gloar ann Aotrou en em ziskouezaz ebarz er goumoulen.

Ar pardaez a zeuz, hag eur vanden koalled a zavaz euz ar gouelec'h hag a c'holoaz ar c'hamp; chetu kik da zibri kement ha ma oe c'hoant. Antronoz vintin ivez, e kouezaz tro-var-dro d'ar c'hamp greun bihan, evel pa vijent bet bruzunet enn neo-bil, hag henvel ouz reo-guenn var ann dour.

Bugale Israel o velout ann dra-ze, a lavaraz ann eil d'eghile : man-hu ? Ar pezh a zioñi : petra eo ann dra-ma ? Rak ne ouient ket petra oa. Moizes a lavaraz d'ezho : hema eo ar bara en deuz roet Doue d'ehoc'h da zibri. Ha setu ama ar goure hemenn en deuz roet divar he benn; rak zastumo peb-unan kement ha ma renk da gaout evit dibri he oualc'h epad eun devez; eur gomorad drezen (Var dro pevar liour). Ha bugale Israel a reaz evelse. Dastum a reant, unan muioc'h, eun all nebeutoc'h; ha pa a vije muzulet ann dastumou diouc'h ar gomor, ann hini en doa dastumet muioc'h n'en doe ket brassoc'h loden, hag ann hini en doa kemeret nebeutoc'h n'en doe ket biannoc'h loden. Ne choume gant pep hini nemed ar muzul merket evit kaout he vara pepdeisiel.

Ha Moizes a lavaraz d'ar bobl, Arabad eo da zen mirout tamm ebed euz ar boed-se evit antronoz vintin. Mes ne zentjont ket out-han. Hiniennou a viraz lod evit antronoz vintin, hag e savaz prenv ed enn-han, hag e vreinaaz; ha Moizes a iez droug enn-han oc'h ho guelet ken dizent. Ar boed-se a oa ret he zastum araok zao-heol, rak pa zeue kre ann heol, ar pezh a choume var ann dour a deuze ann hanter-muioc'h a voed, da lavarout eo; daont ho-

Dont a reaz ar c'houec'hved devez, hag e tastumint ann hanter-muioc'h a voed, da lavarout eo; daont ho-

morad dre bep den : prused ar bobl a zeuz hag hen daevellaz da Voizes. Hag hen a lavaraz d'ezho : mad eo kement-se, ann dra-ze eo en deuz lavaret ann Aotrou : ehan ar Sabbat a zo tra sakr ann Aotrou, ha varc'hoaz ema. Grit hirio ar pezh hoc'h euz da ober, poazit ar pezh a zo da boaza, ha mirit evit varc'hoaz ar pezh a zo da virout. Hag e rejont ar pezh en doa goure hemennet ann Aotrou, hag ar boed na vreinaaz ket ha ne oe kavet prenv ebed enn-han.

D'ar seizved devez Moizes a lavaraz d'ar bobl : debrit hirio ar pezh hoc'h euz miret, rak Sabbat ann Aotrou a zo o ren, ha ne vezo kavet hirio netra var ar meaz. Koulskoude hiniennou euz ar bobl a iez er meaz evit dastum, mes ne gavjont netra. Hag ann Aotrou Doue a lavaraz da Voizes : bete p'eur e fell d'ehoc'h-hu choum hep mirout va goure hemennou ha va lezen ? Moizes a ziskleriaz d'ar bobl gourdrouzou ann Aotrou Doue, hag a lavaraz oc'hpenn : guelout a rit en deuz roet Doue d'ehoc'h ar Sabbat, eun devez da ziskuiza; evit-se e ro d'ehoc'h d'ar c'houec'hved devez daon c'hement a voed. Ra choumo peb-unan enn he di, ha n'a zai den er meaz euz he del da glask tletra d'ar seizved devez. Hag ar bobl a viraz ar Sabbat d'ar seizved devez.

Bugale Israel a hanvaz ar boed-se Mann. Henvel a oa ouc'h had koriandren, guenn a oa, hag he viaz a oa evel him-hou-guilz mesket gant mel.

Moizes a lavaraz c'hoaz dirag ar bobl : setu ama ar pezh a c'houre hemenn c'hoaz ann Aotrou : karghit eur gomor euz ar mann-ze, ha ra vezo miret evit ann dud a dle dont enn ho koude; evit ma anavezint ar bara gant pehini am euz ho magnet pa oc'h bet tennet euz a zour ann Ejipt. Ar pezh a oe great. Hag al lestr leun a vann a oe miret a rum da rum ebarz enn tabernakl, ha na vreinaaz ket. H.

MARI ABIVIN.

(PENNED HA DIVEZA PENNAD.)

Eaz eo deoc'h eridi, tennerien, penaos o veva evl ma ree, Mari Abivin a c'helle rer cals d'ar beaurien; rac d'avez e devoa eun dra bennac. Rei a ree e gwirionez da gement hini a c'houlenne diganthe, ha meur a hini hen deus bet ar hant diganthe, eb caout izom da c'houlenn. Rei a ree d'ar paour, pa en em gave ganthe, eb nac'h nic'h; ha ne selle ket ato petra roe; rac eet e zeus peaurien var ho c'hiz d'he c'haout, abalamour ma ho devoa bet pezion gwen e lec'h mouniz. Rei a ree d'an iliz; rac, evel am eus lavaret, Mari a veze en oll oficoù, ha ne chome biscoas eb rei da gement hini a veze oc'h ober elask; pe d'an oferen vintin, pe d'an oferen bred, pe da c'houesperou; rei a ree c'hoaz bep tro ma veze greet galv da aluzen ar gristenien.

Ispicia! pa veze greet eun dra bennac evithi, neuze he devoa mall da baea an nebeuta tra a vije greet. Nac a vad a ree he unan pa zee da velet ar re glan! he ankounac'hec'hini var dro ar bourg, ha pa en em gave en tyez evit ho gwellet, ar peoc'h ha carantez Doue a iee var

he lec'h. Pa zee denet ar maro ive, da d'ar kuzul d'ann beus bet va unan an dro da velet, spjegementalvad ha veze ar vaouez-ze, ha pegen doun e zee thec'hammouner sov galon.

Beza zo g'ar vertus ha a blij dreist oll da ar zent, abalamour ma blij dreist peb tra da Zoue; eun oberiad a laca an den ken huel hac huelloc'h memez eget ar zent; rac an elez, pa n'ho deus ket a gorfoni ho deus ket al nec'hamant evit beza pur. Ne c'houlent ket lavaret pegen a neat eo bet an ene a iea e Mari Abivin; Doue hac he c'houfessour her goan. Beza zo traou ha ne c'hellont ket dont er speret. Lavaret da eur mab hen deus calon, claskit rei deza da gredi penaos he yam n'he deus ket a garantez evithan, ma teu an dra-ze en he speret, me chomo ket pell; evelse, ne gav ket d'in e vogellet dispartia er speret ar sonj eus a Mari Abivin, hac ar sonj eus eur buret ar c'haera. An re ho deus ho anavezet a c'hoaz oll penaos lavaret d'izazi eur ger ebken dival, an ardissa n'hen devije ket erdet hen ober.

Pelec'h e vije bet euz eun den a ne ket ebken e Plabennec, mez eb lec'h all da n'hen devije ket erdet, enoret eur vaouez ker mad ? Ronez int ar re blij da oll, ar re a zo doujet gant ar re fall, evel gant ar re vad. Gouscoude, etouez ar re a anavezet Mari Abivin, ne zoa hini, daoust pegen dreist e vije ho tle, dok pe na roje eur merk all a anaoudegez vad d'ar vaouez-ze ha santel, pa en em gavent ganthe.

Lavaromp berroc'h e claskit en ho speret eur vad da ober, eur squer a vertus a c'hell da rei eur vaouez er bed, ha me, arac ho clevet, en em deus ket an emm lavaret e cavoc'h kementze e buhez Mari Abivin. Test eo din an oll barres eus a Plabennec; hac eur merk scler ne goez in ket e gaou eo ne gleyoc'h den a lavaret hen devije cavet eun abec bennac enpl; ha pelec'h e ma ar re a c'heller lavaret kement all anezo ? Bennos d'an Aotrou Doue da veza roet da vreiz eur merk nevez hac anad eus e garantez; ha gwaz d'ar re n'ho devezo greet van evit gwellet an Aviel iaket e lizerennou ker scler dirag ho daoulagad.

Dont a reas an amzer ma fellas gant an Aotrou Doue sevel divar an dour ar vaouez deniget. Mari Abivin a iea oajet a bevar ugent vloas; ha goude beza dalc'het mad d'he gizioù santel bet oc'neuz, d'ar 27 a viz genver, er goan tremenet, e voe pilet en desp'et d'ezh gant ar c'hlenved. Sempla a reaz an devez-ze, ma selle d'ezh mont da bedi dirag eun c'horf maro sebet er doug. Digasset d'ar gear, e voe lakeet en he gwelc'h ar me disin a voe galvet, hac hen a lavaraz dez senti out-han. Gant plijadur, emezi, n'em beus ket nac'het senti biscoas. Aben nebeut derveziou, en em gavas gwelloc'h e sonj e devoa da veza pare awallac'h evit moullet d'ar zul varlerc'h; mez Doue he galve da iliz an env. Pa velas e renk ehom var he gwelc'h, e fellas dez da viana caout ar pezh a c'helle eus an oficoù, hac a ree digori var he c'hambr ar prenetier, abalamour da g'ar g'ar vet ar c'han, ha da en em unanigant an bobl d'hisiten. Ne ket possubl lavaret pegen dadius e voe epad he

c'hlenved. Peb tra a ree, peb comz a lavare, a iee da galon an dud.

Da c'houel ar Verc'hez, hanvet ar Chandelour, e tisquezas epad an deiz eul laouenedigez dreist custum; c'hoarzin hac evel ehati a ree gant an dud. Dious ar pardaez e savas evel keus ganthi da veza bet re laouen, hac e lavaras d'ar re a ioa var he zro: Pedit Doue evidon, evit ma teuin da zistrei outhan. Ar garantez he devoa bet evit an dud n'he c'huitaas ket neuze; n'he devoa ken sourey nemet evit mirat na roje diazaman da unan pe unan. Biscoas ne c'houlenas na tizan, na netra; neus fors piou a glaske ober gwelloc'h dezi, ato e lavare en em gave mad. Dious he c'hevet n'he devoa tam poan, mez pardon a c'houlenne digant ar re all, abalamour d'ar boan a ree dezo. He bolontez oa e vije paet kement hini a dremene an noz ganthi; ha dious ar mintiu he deveze ato sonj eus ar baemant. An oll a renke kemeret, pe ober an neuz da gemeret, ma c'hellent cuzat diouthi.

Eaz eo credi e c'hoantez an oll gwelet ar vaouez santel: an Aotrou Person a iee bepred d'he zy, kement a blijadur a ree d'he galon he gwelet hac he c'hlevet. Ar merc'hed bihan a ioa er scol er bourg a c'houlenne hemdez mont ive en dro dezi; mall ho deveze da velet tintin Mari evel ma lavarent. Diou vech hemdez e vezent casset dezi; hac evit gwir, n'he c'houfe ket beza laquet dirag ho daoulagad netra gwelloc'h; cals anezo ho devezo sonj betec ho maro eus ar pez ho deus gwelet ha clevet en ty-ze. Mari ne zisprije digemeret den. Eur zul-vez d'abardaéz ar merc'hed a ioa ganthi a glevas o pignad an deleziou unan bennac a gavent pounner o vale. Mont a rejont betec an or, hac o velet piou oa, e c'hoantejont dialben aneza, rac eur banne a re a ioa ganthan, evel ma c'houient e veze aliez. N'eus fors Mari Abivin he devoa gwelet ar pez a dremene; hac evel ma n'he doa biscoas tamallet na barnet den ebet, ne c'hell-las ket miret da lavaret: Lezit an den-ze da dostaat; hennéz a zo bugel da Zoue; ar re a zo disprijet gant an dud a zo mignonet da Zoue.

Hac izom zo da lavaret gant pegement a feiz hac a garantez ar vaouez santel a recevas he zacramanhou!

Bepret edo ar groas etre he daouarn, pe var he muzellou; ne eane da bedi Doue, nemet evit trugarekat an dud. Aliez e c'houlenne ive sicour ho fedennou, hac e lavare dezo: pedit evidon. Pa dostaas deiz he maro, e c'hoanteaz caout var he gwele, imaj ar Verc'hez a ioa betec neuze azioc'h he fen. Pa voe diskennet dezi, e teuas ken laouen, ma vije lavaret oa deuet ar Verc'hez Vari he unan d'en em zisqueuz d'he daoulagad; comz a ree outhi gant kement a garantez, ma chome an oll eb gellout lavaret ger; mez o velet hac o clevet kementze, e scuillent sioul daelou, eus an daelou a gaver douc da scuilla, hac a vez pell amzer sonj anezo.

D'ar zul araoc ar c'horais, 3 meurs, pa edo an oferen bred oc'h achui, an ene pur ha santel a dorras he chadennou; mervel a reas Mari Abivin, evel pa vije en em

roët da gousket. Ar c'horf he devoa santeleet a voe diskennet er bez d'ar meur, dirag cals a veleyen deuet eus ar parreziou all, hac eur mareat eus a dud ar barrez. Eno e ma e gwered Plabennec, o c'hedal ma teui d'he glask adarre, ha d'he nevezi da virviken, an ene a zo brema, a gredan, er Barados.

Evurus ar re a varv e garantez Doue, a lavar ar scritur saer; berr e cavont neuze ar vuhez an hirra, skân e cavont ar poaniou pounner ha padus; gwelet a reont pegen gwir hen deus lavaret an abostol Sant Paol: an drubuill hor beus a zo berr ha skân, ha gouscoude e tigas deomp eur pouez dreist-muzul a c'hloar. Nac hi a zo dall eta ar re n'ho deus sourey nemet gant ar bed-ma; nac hi zo dall ar re ho deus poan ha labour, ha n'ho lakeont ket var interest er bed-all! Petra servich d'an den gounit ar bed oll, ma teu da goll he ene?

En amzer ma zeo marvet Mari Abivin, e zeus marvet ive cals a dud bet piavidic ha galloudec var an douar, savet huel var gorre ar re all. Pa zint bet diskennet er bez, peger bihan e vezo bet martreze cavet ho ene, e kenver ene Mari Abivin, eus a behini e zeus bet nebeut a gaoz epad he buhez, eus a behini e chomo martreze nebeut a sonj, nemet e memor hiniennou tu-ma, tu-hont.

Da viana, ene santel, pa hon deus lec'h da gredi ho peus brema d'ho tro galloud oc'h unan, ho pet sonj er Barados eus an dud etonez pere ho peus bevet, eus ar re ho peus caret var an tam douar santeleet ganec'h; ho petsonj ispicial eus an hini en deus greetar scrid-ma; meur a vech hen deus bet tro d'ho meuli, pa edoc'h er bed-ma; a huelloc'h mouez c'hoaz e thie ho meuli goude ho maro; chomet eo, her gouzout a ra, cals en tu-ma d'ar pez ho peus greet; mez clasket hen deus da viana, hac gant bolontez vad, rei da anaout oc'h hano, ho maderlez, hac oc'h oberou.

P. KERSIMON, beleg.

LIZIRI DA DUD DIVAR AR MEAZ.

(C'HUEC'H VET LIZER).

Da dud Madalen Penn-Skân.

Petra, va mignoun, ha guir eo'ta ar pez hem beus-me klevet? E peus reüsset gwelet da verc'h ha pardouni d'hezi. E guirione, ne fell ket d'in bihanaat faot Madalen nag he didamallout; rak, me zo sur n'o peus ket c'hoas ankounac'heat ar pez a ris brema zo seis vloa evit lakaat ar plac'h-se da foueltra an affer diot a reas gant fannig ar C'hemener; mes hirio pa eo digouezet ar maleur, hirio pa deu ar c'hilac'har, var lerc'h ar faot, ha mad a vije taoler enn dizesper ar vam gheas-se pehini ne devo varc'hoas martreze eul leac'h evit lakaat he bugaligou da gousket?.....

Ia, great e deus eur sottis hag eur fazi euz ar re vrassa, mes nag hi e deus ho faët ker! Ia zur, eur follentez eo

goassoec'h eghet an toul-ze pehini a ghemer ar yaouankis evit he zaoler var he fenn enn eur püns doue e pelec'h an ners euz al lamm hag ar freskadurez euz an doue a laka erfin he daoulagad da zigori. Abalamour d'a-ze hem beus ato kemeret truez ouz ar merc'hed yaouank-se touellet ha dallet gant ar bed hag a zao en eur c'hoarzin var bag ar briedelez hag a ia, goude bea kollet ho stur; d'en em vruzuna ouz ar garrek: rak-se ive, hem beus ato evit-ho eur plassig em c'haloun d'abenn ma tistroont en eur votela ho faot hag ho dallentes.

Da verc'h, a leveres, ne zistro nemet abalamour m'he deus brema izoum ac'hanout: kemen-se, va mignoun, ne ket guir, rak enn de-all e pedas ac'hanoun gant kals a zaelou hag a hirvoud da c'houlenne he fardoun digan-es; hag ouspen, nag hen deffe ar maleur he bountet d'en em daoler ec'hars da dreid, ha red e vije ober d'hezi eur rebech a ghemer-se? Mes nann: rak ne ket ar vech kenta eo ma en em zervich Doue euz ar vialen evit konvertissa ar pec'her. Ar mab prodig, hag hen a veve gant kik-rost, hag hen a gouske var ar plün pa zonzas distrei da dy he dad? Pell dious eno; hag a galoun vad hen dije memes drebet euz a voued ar moc'h; ha gouskoude kemen-se ne viras ket ouz he dad d'hen reseo gant karante. Ha ni, va mignoun ker, petra deuffemp-ni da vea, ma en em zisqueuze Doue ken difficil evit hor pardouni goude hor pec'het? Ar spount rag an ifern gant eun tamik'glac'har hag eur c'hreunennik karante Doue zo just ar pez a c'houlenne Doue evit hor pardouni; zo just ar pez zo red evit reseo meur a vech ar bloa an absolven digant hor person, enn despet d'hon asfelou. Setu ar pez a c'houlenne Doue evit hor pardou i, gant n'hor beo ket enn hor c'haloun kassoni ouz hon enebourien nag ouz hor bugale....

Lac'h eta, va mignoun, enn da galoun ar gassoni e peus ous da verc'h, ha goude e helli lavaret da bater hag en em daoulina dirag ar groas heb ruzia: rak ne veles-te ket Jezus var ar groas oc'h astenn he ziou-vreac'h d'an oll bec'herien? Ha te, evit eur faot ebken a reüs pardouni d'as verc'h, a reüs bouchad d'he bugaligou? Nann, nann, ne gredan ket e pije ar galoun kriz avoualac'h evit c'hoarzin pa veli, varc'hoas martreze, da vugaligou vihan o kousket var ar c'haled, o c'hlaouri gant an naoun, o redet anter-visket euz an eil dor d'heben epad ma vezi da unan bevet, guisket ha tommet mad; nann, ne pezo ket ar galoun da rei d'ar chass kentoc'h eghet d'as pugale an tamou a gouez euz da daol. Da c'hreg ne vije ket ken didruez; kass a raffe d'an dudigou paour-ze bara, kig hag amann, ha te, ouz he gwelet, a raffe an neuz d'a zerra da zaoulagad, en eur lavaret « mad a ra, muioc'h a galoun e deus eghed-oun-me. »

Rak-se'ta, va mignoun, en em losk da vea teneret; ha nag e pefle, enn eur moument a vuaneghez, rouet da noumpas mui gwelet da verc'h, ne res ket eur pec'het brassoc'h o terc'hel d'as gber? — Oh! nag hi zo bras ha kriz ar poaniou a c'hortos er bed-all an dud a goler hag a gassoni! nag hen zo poaniou gwelet eur prenv douar pehini n'en deus nemet eun heur da veva, oc'h ober al

le da zerc'hel eur gassoni peurbadus! nag heb zontistid ispicial eun hevelep le a bers eun tad pehini zo gwelet he gwelet han mervel etre daouarn an drouk-sperec' eghet lavaret ar galon ar c'hoarzin kristen-ma. Me a bassup doue, Doue! Erghis-se gouskoude eo e varvas Job, er bloa trimec'h. He vab a zimezas enn despet d'hean d'ar c'haloun plac'haouank fur ha koant, mes da behini e vanke douarou hag ar c'hant: an daou zen yaouank a veve hag a vevo ato gimus; mes an tad hen doa touet da noumpas mui gwelet he vab, hag e guirione enad pemzek vloa heb deus maleur zamant dalc'het d'he c'her enn despet da oll demarhou he vab. Gouskoude e teuas ar c'hlenved ha goude an c'hlenved an heur euz ar maro. An Aotrou Person, enn he zao ec'hars guele ar c'hlanvour, ne heante da lavaret d'hean: « ma ne bardounit ket, ne vo ket pardounet d'heoc'h. » ar mab ar verc'h kaer hag ar vugale a ioa er c'hostes-all prest d'en em daoler etre diou vech ho zad, mes hema a joume ato reud ha didruez en eur heja he benn. Gouskoude n'oa ket a amzer da goll: ar maro a verke oa prest da skei; hag ar beleg a asped ar c'hlanvour da gaout truez ouz he ene ha da zonzal enn fern e pehini e koues ma ne bardoun ket.

Ar c'houmzou divea ma a laka Job da skriva: sevel a ra enn he ganvanze, hag en eur zellet piz ouz ar beleg e lavar: « Aotroun Person, hag eur eo ar pez a lavarit a-ze? » Ah! Ia, a lavar ar beleg, o zonzal ar barti gounezet, ia ken guir evel m'hen ma ho mab er c'hostes-all prest da zireded etre ho tiou-vreac'h.... Nann, nann, a respount neuze ar c'hlanvour gant eur vouez huel ha koleret, ar pez zo millighez zo millighez, krivi a rit e ian gant an diaoul, mes m'hem beus douetans ha da viana e fell d'in c'hoan eun taol kit pe zoub! Ar c'houmzou-ze a oue he re divea: koueza a reas var he vele, mes ne zavas mui. Hanta, va mignoun, karout a raffe mervel er ghis-se ha c'hoari ive eun taol kit pe zoub! enn da voument divea?

Losker a ran gan-es ar zizun-ma da zonzal, ha dissul kenta, goude an ofern bred e kemerin Madalen hag he bugale evit mont da c'houlenne digan-es eur bannik souben an anduill pehini a vo drebet c'huek, me bromet d'id, goude ma vezi en em unanet gant da verc'h ha goude ma po lavaret o taou ho mea culpa; rak ne ket hebken Madalen a zo tamallus enn affer-ma; anzaou ive, mignoun, penaus n'oas ket dibec'h pa loskes re a ziblen gant da verc'h ha pa zigabestes memes an hezi, ar peza zigoudeze da zeis pardoun ar Filippet....

(Eur pennad all eur vech all.)

- Hano ar Zent evit ar Sizun-ma.
- DILLUN, 22 Gouere. — Santez Mari Madalen.
- DIMEURS, 23. — Sant Apolliner, merzer.
- DIMERC HER, 24. — Sant Bazil, escop ha docteur euz an itis.
- DIZAB, 25. — Sant Jakez, abostol.

DIRGUENER, 26. — Santez Anna.
DISSADORN, 27. — Sant Samson, escop.
DISSUL, 28. — Seisvet sul goude Pantecost.

An Abostol hirio.

Va breudeur, lavaret a ran ar pezh zo dioc'h doare an den, abalamour ma c'houzon pe guen dinerz eo ho corf. Evel ma oc'h eus laket oc'h izili da zuja d'an impurete ha d'an displeadet evit en em rei d'ar pec'het, lakit-hi brema ive da zuja d'ar justis, d'al lealdet, evit en em sanctifia.

Rag pa voac'h sclavourien d'ar pec'het, ne zujac'h ket d'ar justis, d'ar zantelez. Hognen pe seurt frouez a deniac'h-hu neuze euz an dizurziou-ze a ra deoc'h brema ruzia? An dizurziou-ze n'eus nemet ar maro er penn anezho.

Mes brema dilivret dioc'h ar pec'het ha great servicherien da Zone, ar frouez a dennot a vezo ar zantelez, hag er penn e cavot ar vuez eternal. Rag gobr pe pae ar pec'het eo ar maro; gras Doue avad eo ar vuez eternal dre Jesus-Christ hon Aotrou.

Lizer Sant Paul d'ar Romanisted VI. 19. G. M.

KELEIER.

Beleien canton Landiviziau o deus savet pemp cant lur evit lacat eur zouav e servich hon Tad Santel ar Pap.

Cazeten ar Meziou a lavar eo kereat an ed eun dra bennag en derveziou diveza e Frans hag e Brozaoz. Da guer Marseil, etre an ugent hag an tregont a even ez oa digasset ouспен daou c'hant mil pouzellad ed (hectolitr), hag an ed-ze so savet ac'hano dre ma teue. Ne jome ket ouспен triugent mil boezel d'an deis diveza euz ar miz; ar pezh a ziskuez ez euz izom ed eun tu bennag. An eost, e kement ha ma c'heller comz anezhan araog m'eo great, hag ervez ar c'heleier deut a bep tu, a vezo eun cost e nestamant epken.

Ar memes cazeten a ro an aliou-ma: Mar oc'h eus c'hoant da viret oc'h ar viou da vreina, soubit anezho en eol, hag e chomint mad pell amzer. An heol a stang ar toullouigo dre bere ez a an ear a dreuz ar c'bloz hag a laca ar viou da vreina. Mar oc'h eus c'hoant da ziuenn razet divar dro ho ti, lakit craon gall da drempa epad eun nebeut derveziou el lichou; tolit neuze ar c'hraon-ze eleac'h m'eo boaz ar razet da zarempret. Ar re ho debro a grevo. Ar c'hraon-ze ne reont ket a zroug d'al loenet all.

An eskibien bet e Rom, so distro lod anezho d'ho escoptiou. Euz a Franz ez euz bet trizeg escop ha triugent e Rom, da lavaret eo cazi oll eskibien Frans so bot e solanité gouel Sant Per.

AR VILIN A BINIJEN. — E Brozaoz, en tiez a binijen, eleac'h ma laker ar vacabantet hag ar beorien, ez euz e

doare milinou tro henvel oc'h caouet eur guiver pe eur c'has coat. Pa vane unan bennag en hezever, e vez laket er vilin-ze eleac'h ma zeo red dezhan trei evel ma ra ar guiver en he gaouet: pe kentoc'h, ar vilin eo a dro, hag ar prizonier zo red dezhan lacat he dreit da c'hoari pe e ve ruillet ha goal laket.

N'eus ket pell eur barner hag en doa condaonet meur a hini d'ar binijen-ze a fellas dezhan gouzout penauz oa great ar milinou-ze, rag en doa gullet morse nicun o vont en dro. Dont a reaz eta da zellet oc'h unan; pignat a reaz enhi da velet penauz oa great, hag e pedaz ar gardian da lacat ar vilin da vont en dro eun tamig. Laket oue ar vilin da drei. An hini so er vilin-ze ne all chom da eana tam ebet. Bez'ema var eur rod, ha bep pazen a deu dirazan e ranc lamet varnizi, ha petra bennag ma chom ato er memes leac'h, eo red dezhan finval he zivesker evel pa ve o vale a dis. Abars ma e doa great ar rod eun dro pe ziou, ar barner a lavar as d'ar gardian dere'hel ar vilin a'za.

Ne allan ket, eme ar gardian, ken a vezo abenn ugent minuten ama. Laket em euz ar vilin evit ar verra pinijen, ha ne ellan ket he delc'her a za ken na vezo echu. Ne oufen pe rafen deoc'h, mes ugent minuten eo red deoc'h chom aze.

Gullet a rit-hu ac'hann pebez min a rea ar barner kez? Clevet a rit-hu pebez saosneg a loske? Chom keit all da zevel he zivesker teo ha pounner an eil varlerc'h eben buan buan, ep ean ebet? Teo oa ar c'huezen varnezhan, ha biscoas marteze ep he vuez n'en doa great eun hevelep crogat.

Cridi a rer ne gondaono ket ker buan iviziken ar re all d'ar vilin a binijen.

PRIZ AN ED.

KEMPER. — 15 Gouere.	PONTNABAT. — 11 Gouere.
<i>Priz ar c'hant lur.</i>	<i>Priz ar c'hant lur.</i>
Guinis.... 44 lur, 76 c.	Guinis.... 45 lur, 94 c.
Segal.... 44 lur, 54 c.	Segal.... 40 lur, 83 c.
Eiz..... 8 lur, 45 c.	Eiz..... 40 lur, « c.
Ed-du.... 7 lur, 96 c.	Ed-du.... 8 lur, 75 c.
Kerc'h.... 9 lur, 50 c.	Kerc'h.... 9 lur, 50 c.
Avalou-douar 5 lur, 00 c.	Avalou-douar 4 lur, 25 c.

MONTROULEZ. — 15 Gouere.	BREST. — 15 Gouere.
<i>Priz an hectolitr.</i>	<i>Priz an hectolitr.</i>
Guinis.... 25 lur, 70 c.	Guinis.... 25 lur, 94 c.
Segal.... « lur, « c.	Segal.... 23 lur, 92 c.
Eiz..... 15 lur, « c.	Eiz..... 13 lur, 58 c.
Ed-du.... 8 lur, 59 c.	Ed-du.... 12 lur, 04 c.
Kerc'h.... 10 lur, 03 c.	Kerc'h.... 10 lur, 70 c.
Avalou-douar 14 lur, « c.	Avalou-douar 9 lur, 40 c.

Ar Gerant: AR. DE KERANGAL.

Kemper, moulet gand AR. DE KERANGAL, Moulet an Escopti.

FEIZ HA BREIZ,

KELOU A BEP BRO, HA KENTELIOU VAR BEP TRA,

DIGASSET BEP SUL

Da guement Christen a goms ar brezouneec.

Eun Abonnamant d'ar Gazeten a goust:

Evit eur bloas..... DAOU SCOET.
Evit c'huec'h miz..... EUR SCOET.
Evit tri miz..... C'HUEC'H REAL.
Eur gazeten ebken..... DAOU VENNEC.

Ar baecamant a dle beza great araog caout ar gazeten.

ALIOU.

Ar scrijou a ve c'hoant da lacat er gazeten a dleer da adressi oll d'an Aotrou MORVAN, Beleg e Kemper.
Ar paecamanchou a dleer da adressi d'an Aotrou SALAUN, ebken. An abonnamant a guemerer e ti an Aotrou SALAUN, librer, ru Kereon, e Kemper.

KEMPER, 27 Gouere 1867.

Serifagner ebet ne ell lavaret pe guer caer eo bet ar gouel e Rom, an nao varnugent a viz Even. Kement a eller da ober eo lavaret ne aller ket merca traou evelse. Ouspou pemp cant escop, ouспен ugent mil beleg, cant pemp varnugent mil a dud estren; oll ilizou Rom, hag hi carguet a aoteriou, re nebeut anezo evit ma c'halic an oll veleien oferenna, petra bennag ma lavaret oferennou ep distag ebet azaleg goulou deiz bete tremen creis deiz, ma zeuz e Rom tremen tri c'hant iliz, ha c'huec'h aoter e pephini da nebeuta an eil dre eben, ha ma zoa hiniennou euz an ilizou eleac'h ma lavaret bete pevarnugent oferan bep'heur, an oll dud-ze destumet e procession gant kement so a gaer er guer guenta euz ar bed, penaus comz evel m'eo dlet euz a guementse?

Ker caer oa ar zolanite ma c'helllet he c'hemeret evit eur skeuden pe eun tanva euz a eurusdet an Env; ha gullet ez euz etouez ar prez eun den troet he speret hag a zo falvezet dezhan en em laza. Cregui a rejor enha hag e voue goulennet outhan perag oa falvezet dezhan ober eun dra evelse:

— Ah! emezhan, me am oa c'hoant da vont ive d'ar barados troad oc'h troad gant ar zaent nevez!

Petra bennag ma receo bemdez hon Tad Santel eun niver braz a veleien, an oll n'o deus ket gallet c'hoas beza diguemeret, da viana n'oant ket bet diguemeret oll c'hoas pa scrifet kement-ma. Meur a hini so chomet e Rom hirroc'h evit n'o doa sonch, evit gallout caout an eur vad da vont beteg an Tad Santel. An oll eskeb zoken n'o doa ket gullet ar Pap en he bart he unan.

Ma n'oa ket bet c'hoaz diguemeret an oll veleien, eun antercant servicher bennag eat di da heul lod a Eskibien Frans, a ioa bet revevet, hag ar Pap en doa great rei da zibri dezho en he di. Evelse, eme ar serifagner a vere kement-ma, e ti ar Pap e tigouez evel e ti hon tad Pehini so en Env, eleac'h m'en em gaf aliez ar re guenta da veza ar re ziveza, hag ar re ziveza da veza ar re guenta.

Evit ar zaent nevez, ez eus laket, ervez ar c'hiz, da ziskuez d'an oll, taolennou peintet eleac'h ma veler unan bennag euz ar burzudou great gantno.

Ama e veler eur vaouez, debret oll gant ar c'hign-beo, dilezet gant ar vedecinet, azeza a ra var eur gador a ioa bet servichet da Franseza ar pemp gouli, ha ker-kent e sao pare ha iac'h evel biscoas. Aze eur vaouez all, debret ive poull he c'halon gant ar c'hign-beo, so parec'o lacat var ar gouli skeuden ar plac'h eurus.

Var eun daolen all Elizabeth Bouzantio, dare da vervel gant ar c'hign beo ive, a laca var he gouli eun tam euz a zae an den eurus Leonard a Bors Moris. Cousket a ra ha pa zihun en em gaf pare ep ma chomfe zoken eleizen ebet. Laroc'h ez euz eur c'hlanvouc all o langussa abaoue pell amzer. Leonard en em ziskuez dezhan, a ro dezhan ar grucifi hag a lavar dezhan sevel euz he vele ha dioc'htu en em gaf pare.

Goudeze e veler eur c'hlanvouc all a laca he zouguen da vez an den eurus Per Arbues. Cousket a ra eno, hag e vel dre he gouse ar Vere'hez hag ar zant, ha pa zihun en em gaf iac'h tre. E kichen ema relegou merzerien Gorcum douguet e procession dre ruiou kear Bruxelles hag o para, dre ma zeont, cals tud elan pe mac hagnet.

En eun daolen all e veler goad an den eurus Per Arbues o virvi el leac'h ma voa bet laket, var have an ilis. Ar chalonied, he guenyreudeur, a lavar olls an abadoun ha tud vad a zestum he c'hoad. En tu all ez eus eur vaouez, dallez, hag a deu ar gullet dezhi o lacat var he daoulagad eun tam euz a cilis an den eurus Josaphat. Neuze e veler eun den hanvet Adrian Orschot, o troc'ha eur vozat glasvez el leac'h ma voa bet laket d'ar maro merzerien Gorcum, hag o lacat ar glasvez-ze en eur c'hassedic coat. Daou c'hant vloas goude, ar c'hassedic o veza bet digoret, e voue cavet ar glasvez fresc beo, hag en ho zouez naonteg blennen pe fleuren ruz, ken aliez a fleuren evel a verzer. — Gullet a rer goudeze eun den elan gant eur galaden ha n'oa ket a bare outhi, o tont da veza iac'h en eur zellet oc'h skeuden an den eurus

Paul ar groaz, en eur c'houlen sicour outhan. — Ar memes den eurz a veler larcoc'h o lacat da greski an ed en he gouent, epad pevar miz, evit maga eis manac'h da daounguent hag eun niver braz a beorien.

Guelet a-er ive eun den nobl euz ar Pologn coezet en esclavaeh dindan an dud divadez, carguet a chadennou ha mantret gant ar glac'har. En em erbedi a ra oc'h Josaphat pehini a deu d'en em ziskuez dezhan gant he zillad a Escop. Touch a ra he vaz Escop oc'h chadennou ar prizonier. Ar chadennou a dor hag a goez, ha neuze ar zant a c'houre'hemen d'ar prizonier mont d'he vro.

Eur plac'h hanvet Lucia Noel, torret he gar, a laca he douguen var bez Germana Cousin, hag a ia ac'hano d'ar gear var droad ken eun ha pep den. — Eur vaouez all hanvet Franseza Huot pehini ne alle finval ezet pell a voa, a deu en eun taol buez ha nerz en he izili goude beza great eun navet en honor da Vesaerez Pibrac, da lavaret eo da Germana Cousin.

An oll daolennou-ze so caer ha great gant penterien gouezieg. Diskuez a reont unan bennag euz ar burzudou anavezet evit guir gant an iliz a Rom araog lacat ar re o deuz ho great e niver ar Zant.

Unan euz an traou o deuz great plijadur d'ar veachourien so bet e Rom eo ar c'han euz an *Tu es Petrus*. Ar ganderien a voa rannet e tri c'heur pe teir banden, ha tri pe bevar c'hant e peb banden anezho. An teir banden-ze a ioa pell etrezho, hag e respontent an eil d'eben. Ar vanden greiz a ioa savet huel huel dioc'h an douar ha ne voa enhi nemet bugale ha moueziou moan; hag ar moueziou moan ha skiltrus-ze a vije kemeret evit moueziou. Elez o tisken euz an Env. D'an ofertor eo bet ar c'han dudius-ze.

An eskeb a voa e Rom o deus casset d'hon Tad Santel ar Pap eur scrit hanvet *eun adres*, hag a voa varnezhan pemp cant seiz ha tregont hano pe sinatur.

Er scrit-ze, re hir evit he lacat ama a bez, an eskeb a lavar d'ar Pap emaint e Rom evit diskuez dezhan pegue-ment int douguet evithan hag evit cador Sant Per. Oc'h en em gaout evelse a vanden e treid vikel Jesus-Christ, an unvaniez etrezho a ielo var gresc.

Ar re, emezho, zo discleriet sant en dervezio-ma, a ziskuez ez eo ato an iliz leun a vuez. Ar bed a jom souezet o velet an traou burzudus great gant an dud, ha Pii Nao o tiscleria santelez servicherien Done a ro ali deomp da zavel hon daoulagad etrezeg an Env eleac'h ma'ema pep furnez.

Ar c'hantvet bloaz en honor da Zant Per a ziskuez ne jench ket an iliz catolic, hag ez eo diazezet var eur mean ha ne all ket beza discaret.

An eskibien a deu da nevezi kement o deus bet merket e scridou all laket gantho araog brema dindan daoulagad ar Pap. Assanti a reont gant kement en deus great ha lavaret ar Pap; condaoni a reont kement en deus condaonet. He veuli a reont dre ma tale'h stard da zifen guirion an iliz, da stourn oc'h an erroliou, da lavaret ar virionez d'an oll. Meuli a reont ive ar bobl a Rom dre

ma tale'h mad, da gador Sant Per, dre ma zeo ato douguet evit ar Pap.

Diskuez a reont ho joa o clevet hano da zerc hel eur senet jeneral. Ar senet-ze, emezho, a ziskuezo unvaniez an iliz, a bouzo ar gristenien etrezeg ar peoc'h hag ar zantelez, hag a laca an iliz da luguerni mui evit biscoas.

Lavaret a reont e tle an oll difen guirion an Tad Santel evel Pap, hag evel roue, hag he zicour da ellout ober he gargep ma touse petra da viret outhan.

Ar Pap en deus trugarekeat an eskibien euz an oll zantimanchou mad a ziskuezo en he guenver, hag en deus discleriet en devoa c'hoant da zigueri ar Senet da zeis gouel Conception didach ar Verc'hez Vari, er bloas 1868.

Penauz e vijac'h-hu en em guemeret, lenner, ma vijac'h bet en Itali, ha c'hoant deoc'h da viret oc'h an eskeb ar veleien hag ar gristenien vad euz ar broiou all da voat da Rom? Marteze o pije clasket stourm outho dre ners; stanca an hent outho; hoguen biken n'o pije sonjet ober ar pez o deus great tud difeiz, dispac'herien an Itali. Ar re-ma o doa eur boan galon vraz o velet kement a dud o vont da gaout hon Tad Santel ar Pap. C'hoant hag ioul o doa da viret outho da vont; gouscoude ne gredent ket cregui enho hag ho c'has en dro. Red eo ta'clase ijin pa na vez ket a ners.

— Petra, a lavaret-hi d'ar veachourien, hag ez it da Rom! ha ne onzoc'h-hu ket ema ar c'holera eno, hag e varf tud evel kelien?

— Mad, eme ar veleien hag ar veachourien all, nemet muioc'h aze a izom so ac'hano mp e Rom. Mar deus kementse a dud clan, e raimp vad dezho o vont var ho zro.

— Mes, a lavaret c'hoaz ar botred vad, petra zervich deoc'h mont da Rom? Eno ne vezo solanite ebed. Ar Pap so toc'hor. Maro eo zoken a lavar lod.

— Mar deo toc'hor ar pap, ni, eme ar veachourien, so he vugale, hag eo dlet deomp mont da velet hon Tad; ha mar deo maro, eo dereat deomp mont d'he enterramant.

— Ha ne onzoc'h-hu ket, emezho adarre, ez eus laeron a vandennou var dro Rom, hag e risclit ho puez o tost oc'h ar gear-ze? Ar Pap zoken gant he zouavet en deus beac'h o tioual kear outho.

— Kent aze, eme ar veachourien, e sicourimp ar zouavet da zifen ar Pap ha kear Rom a enep al laeron.

Ha ne ket speret o deuz an italianed vad-ze? ha ne ve ket sonjet clevet eun tamig mam goz bennag o clasc ober aoun d'he bugale vian pa bellaont diouthi, hag o lavaret dezho: na dif ket aze! aze ema an dra-ma, aze ema an dra-hont!

Hoguen ar belerinet a iea da Rom ne reant van, hag a iea ato gant ho hent. An dud difeis-ma a gounnare, mes petra da ober, pa n'ho zilaouet ket? Mont a rejont bete guisca soudanennou, o sonjal e vijent silaouet guelloc'h; hoguen poan gollet e voa ato evitho.

O velet-ze ar ganfardet a lavare: ne allomp ket miret oc'h ar veachourien da vont da Rom; mes dont a raint en dro, ha neuze ni ben talvezo dezho; ni ho moguedo. Hag e guirionez calz euz ar veachourien en eur zont euz ar gear a Rom, a so bet moguedet; so bet great dezho tremen dre ar moguet, evit eas dioutho an ear fall, an had clenvet a alje beza deht gantho: Ma kementse so bet great e meur a gear euz an Itali. Ha c'hoaz e vezo cavet marteze unan bennag hag a lavaret n'o deus ket a speret ar ganfardet-ze!

G. M.

MERZERIEU AR JAPON.

(Seizvet pennad).

Er bloas 1616 e tirollaz eur vrezel nevez a enep ar religion gristen er Japon. Eun Impalaer iaouanc a ioa nevez savet var an tron. He dad en doa laket cals christenien er prizoniou, hag araog mervel e lavaras d'ho vap e tlie ho distruja oll, hag ar map a zentaz oc'h he dad eriz. Neuze e voue merzeriet eun niver braz a gristenien hag en ho zouez meur a vissioner. Lod a voue laz et dre ar c'hleze, lod all dre an tan.

An impalaer nevez, e veza dent da gear Meaco, a gleyaz oa leun ar prizoniou a gristenien. Dioc'htu e roaz urs d'ho devi oll goazed ha merc'hed, coz ha iaouanc. Ne fellas ket dezhan e vije gortozet eun dervezio bennag gant eun itron a reng huela ioa tost da vouilloudi. Pa voue deut an deis merket, e voue casset ar gristenien, antercant anezho, en eur porz eleac'h ma vouent liamet. Neuze e vouent casset var eun dachen e creis kear eleac'h ma vouent laket e kirri, ar voazet e lod, hag ar merc'hed hag ar vugale e lod-all; hag ar vugale-ze a ioa c'hoas lod anezo o tena. Eun trompiller a iea en ho raog, hag e penn pep ru ec'h encante en joa an impalaer condaonet an dud-ze d'an tan, abalamour ma voant christenien. Ar verzerien ive a lavare: *Guir eo, mont a reomp da vervel evit an hini en deus roet he vuez evidomp*; ha bep en amzer e crient oll a eur vouez: *Bevet Jesus!* Lavaret a reant goudeze traou ker caer; diskuez a reant kement a laouenidiguez ma lakeant an oll da vouela.

An tantada ioa pourchaset e meaz a gear. Pa zigouezaz ar gristenien eno, e veljont croazio plantet en douar, ha berniou keuneut destumet en dro dezho. Ho levenez a grescas c'hoas neuze hag e tiskenjont scanv braz euz ho c'hirri. Staguet e vouent neuze daou ha daou oc'h ar c'hroazio, an eil troet oc'h eguile, ar voazed hag ar merc'hed disparti; ar vugale vian a voa e kichen ho mamou. Ar mogued a dlle da guenta mouga ar verzerien; mes pa oa eat ar moguet en he dro ha pa voa deut an noz e vouent guelet sclear, ho daoulagad savet etrezeg an Env. Chom a reant ep finval e creiz ar fournier ruz-ze, hag e vije lavaret e tanveant dija joaiou ar barados. Eun nebeut goude e vouent clevet oll var enn dro o cana meuleudi da Zone, ar pez a iea bete gouelet an oll galonou; hag ar pez ho zenereas c'hoas muioc'h oa guelet ar mamou keiz, e creiz an tan, o kemeret souresi euz ho bugale, hag oc'h ancounac'hat ho soan ho unan evit bihanaat hini an elezigou-ze. Ober a reant stad anezho, gant ho

daouarn e pelleant ar flam dioc'h ho bizach; poket a reant dezho ha sec ha ho daelou, hag e lavaret dezo a bep seurt comzon brao ha kaloneg evit he c'houzaon dezho da c'houzaon eur pennadig eur boan hag a ielo ho c'has da eun eunusdet eternal. Mervel a rejont oll an d'har-lersh eguile, ha dre ma varjont an daelou hag ar huan- padou a greske etouez ar re a voa o sellet.

An douar gen honrapia euz ar vanden verzerien-ze a voa lacet Enximoto, hag he c'hreg, lab Enximoto da han- euz ar brassa, Antonez a lez an Impalaer. He c'hreg e voa an hini eno, doa ket prout an Impalaer gontos an- vije gouilloudet araog he lacat d'ar maro. C'hoaz h'bu- guel o doa. Ar c'hossa euz ar botred a voue savet et en- despet d'an tad, ha d'ar vam pere o divije, caret mont dirag Doue gant ho bugale oll a vanden. Ar pemp all a voa diou verc'h, unan daouzeg, hag eun all tri bloaz, ha tri hont, unan unpege, eun all eiz hag eun all e huez h- vloas. Ho femp e tale hont mad beteg an huana da veza, hag e c'houzanyjont ar verzerien gant kement a galon- evel ho zad hag ho mam. Goude ho maro e voue cavet ar verc'h viana e kerc'henn he mam, ha stag outhi evel pa na raj e an daou gort nemet man!

Ar re ma rea tiranted ar Japon ar brezel dezho gant maia counnare voa ar vissionerien. Emt chassal exclse ar religion hag ar veleien euz an Europ, e voant sicour aberz an Hollanted hag ar Zaozon. Er bloas 1622, ent lestr euz an Holland pe euz a vrozaol a bacaz eun hostrig euz ar Japon hag a voa christenien eun. E tregou ar gristenien-ze e voa daou dad missioner guisket evel daou varc'hadour. Unan anezho a ioa eun tad a lirs Sant Augustin hanvet Zugnica, euz a Spain; e guile a voa eun tad a urs Sant Dominic, hag a voa he hano Louis Florez, euz a Flandrez. Tad Per Zugnica a voa a lizez huel, hag a voa bet Bez-roue er Mexic. Ar Zaozon hag an Hollanted a reas kement epad eur b'os ma voue deuet an daou dad missioner-ma, cabiten al lestr hag hi, an deg a viz eost 1622. Ar re a voa gantho var al lestr a voue diben- net oll. Lavaret e voue dezho e vije lezet ho buez gantho mar carjent azeuli fals doucou ar Japon; mes neus anezho ne falgalonaz; oll e tale hont mad d'ar reiz, hag oll e c'houzanyjont ar maro.

Ouspenn ar verzerien-ze a lakeat d'ar mare a vanden- non, e voa c'hoaz eun niver braz harluet, casset da gar- teriou gouez eleac'h ma varve meur a hini anezho gant an naoun hag an dienez. Guelet e voue neuze er Japon kement a ioa bet guelet e Rom hag e leac'h all epad an- tri c'hant vloas kenta euz an iliz. Guelet e voue tud euz ar goad huela casset d'an harlu o scrifa liziri caer evel a rea an ebestel hag ar verzerien guenta da dud ho c'har- ter evit rei calon dezho da zerc'her mad d'ho religion. Guelet e voue gragnez ha plac'het iaouanc casset da drez fall o sonjal ho dishenori, o tralla ho bizach gant ar gon- tel pe gant ar cizail evit dont da veza diforch ha spont ho- guelet, evit gallont miret evelse ho guere hdet. En eur- guer, christenien ar Japon a roaz an oll skuenou caer a laca ac'hano mp souezet pa ho lennomp e Duez ar zant a veve en amzer an Impalaered paen. G. M.

BREMA HA GUECHALL.

Nan, caer am euz selled en dro d'in, ne velan ket e ve eassoc'h beva en hon amzer eget en amzer dremenet. Evel ma kendalc'h ar goanv da zond varlerc'h an hanv, an hanv varlerc'h ar goanv, ar barrou amzer, ar goal avelou varlerc'h an amzer zioul, er memez tra e kendalc'h an dud da veza gueach trist ha gueach laouen, gueach var ho zu ha gueach e poan, en anken. Me gred erivad e vezo bepred an traou en hevelep doare, keit ha ma pado an heol da vond en dro evel ma za, da zavel ha da gazed gueach kentoc'h, gueach divezatoc'h. Da voaz ma'z on me dioc'h an dud, me Lan An Dall; daoust d'an anaoudegez am euz a bell zo euz an dud a c'hounid ho bara en eur labourad an douar, nag etouez al labourerien vraz, nag etouez al labourerien vihan ne velan ket e padfe bepred, hep distag, nag ar boan nag ar blijador, nag an dienez, nag ar binvidigez.

Var ar meaz gant al labourerien ar vuez a zo evel en aod gant ar mor, an houlou, mond, doud, pignad, diskenn, hag atao evelse euz a greac'h da draon, euz a draon da greac'h. Klaskit eta, Aotrouien, tud a spered, tud desket en tu all d'ar paour keaz Lan An Dall, klaskit an tu da zere hel ar mor kloz ha reiz en eur memez leac'h, evel en eur prison, ec'hiz ma vez dalc'het eun torfetour gant he chadennou en eun toull du a gostez: toull eul leho, eur ster gaer, ha gourc'hemennit juridik d'ar mor ma paouezo divar ar mare da fringal, da lammed, da drouzal, da c'haloupad, da vrevi ho listri tan, ho listri brao ha pinvidik, d'ho freuza, d'ho dispenn, d'ho drailla, d'ho mala, da ober anezo kant ha kant mil dam, kentoc'h, easoc'h eget na hell eur c'hrouadur, eur paotrik skuiz gant he c'hoariel, he vressa, he grevi dindan he dreid, eget na hell eur plac'hik, mouzet oc'h he merc'hoden, he stlapa, he c'holl en eur poull-dour, rei dezi he c'hempen, eur fouetaden a zoare, he lakaad e noaz.... Doctored ar bed, o c'houi a oar kement a draou, gallek, latin, gregach, saosmek, ha marteze zoken brezonek, nan, ne glascot ket ober eun hevelep tra; re vad e c'houzoc'h e kollfac'h ho poan hag hoc'h amzer; n'hoc'h euz ket a c'hoant c'hoaz da veza staget oc'h eur strapen, pe eur ruillen evel eun darn anevaled.... Goucoude, ker buhan e teufac'h abenn da chadenna ar mor, evel da lakaad en ho eaz an oll dud euz ar bed, da zere hel bepred en ho blijador an oll dud a dro, a freuz, a gloz an douar evit gounid ho bara, evit kaoud peadra d'en em viska.

Mar fell deoc'h sevel, kement ha ma hellit, al labourerien douar var ho zreid, ho zieour da gaoud guelloc'h blaz, muioc'h saour gant an tam bara groz a ia en ho ginou, ober anezo tud euruz, daoust d'ar boan, d'ar skuizder a ro dezo ho labour, klevit eta ganen petra hoc'h euz da ober. Evit guir mezo eun den divar ar meaz, guisket groz ha maget paour, hag a zo, dre-ze, eun dra dizoare aoualc'h evidon, prezeg da dud kear, da dud a zo ker brao troet ha ker flour guisket. Me a zebr d'am

fred liesoc'h a veach iod, palatez, crampez.... eget kig bevin, maout, leuc, ha dreist oll rost, klujiri, keveleged. Nemet eun diou pe deir zro e kear n'em euz ran- ket lipad, va mourrou goude beza tanveat tammou ker c'houek evit ar galon. Me, pa vez tize, toull va dillad, ne d'an ket d'ar mezer finna, d'ar mezer kerra evit prena da vez d'en em viska a nevez. Oc'lipenn, evel a ouzoc'h mad, Aotrouez, ne ket gant dragou seiz, na gant rokedentoulou ec'h bell nag e tie kouer mond d'ar park, d'an aod, en em lakaad da ober karzaden, palamad.... Nan, nan, an dra-ze zo anad da bep diot.

Mes, a eur c'hostez all evelato, pa maon var ar meaz, pa vevan abiaoue keit all gant an dud a labour var ar meaz ec'h tiellan gouzoud eun nebeud petra ra vad, ha petra ra droug var ar meaz. Dre-ze ta, tud chentil, hep ma ve em penn, em spered an disterra c'hoant da ober poan da dud a skiant eveldeoc'h, da veza direspet evit tud troet brao, evel ma'z oc'h, me lavaro deoc'h eun dra, eun draik hepken, ne evesait ket outhi c'houi nemeur lod ac'hanoc'h, hag a ra dioc'h ar guella kont al labourerien, koulz en atanchou braz evel en atanchou bihan. Sellit, Aotrouien, me gomz deoc'h evel ma labouran pa vezan er park. Gueach ez an var eun gant an ero, an hant, gueach ez an a dreuz, a gleiz, a zeou, dioc'h ma c'houlen al labour. An dra-ze ne ra ket, n'e kuir, gant ma vezo labourer mad ar park. Neuze ta me ia atao en dro gant va c'haoz, hep sonjal pe ez an var eun, pe ez an a dreuz; an affer eo ma kendalc'himp d'en em glevet, da veza hostisien, ha ma roet c'honi, tud kear, vad muia ma hellod d'an dud a zo var ar meaz.

C'hoant guirion hoc'h euz-ha, aotrouez, tud chentil, e ye peoc'h, plijadur, buez euruz var hor meziou? Grit neuze evelhen. Eleac'h discar, moug a nebeudou ar feiz, ar relijion en hon touez, eleac'h lavared deomp kement a gaosiou drol en ho staliou, ho cafeou, hoc'h hostalirion, var ho ruion, e kreiz ho foariou, ho marc'hajou; poanit ma tevio al labourerien, a zeiz da zeiz, da veza furroc'h, honestoc'h, guelloc'h kristenien. Rak, klevit ganen, aotrouien, ha na fachit ket, dre ma sem- plaio ar relijion en hon tiez soul, dre ma tevio herroc'h an honestiz en hor parkeier e mesk an drevajou, ar melchen, an irvin, ar panez.... ni a vezo diesoc'h, me- mez e kear, kaoud affer ouzomp, ni a zeuio kammoc'h hor bizied oc'h hon daouarn, ni a vezo dougetoc'h da labourad gant ar rastei eget gant ar forc'h, ni a vezo pounneroc'h, caletoc'h, danjerusoc'h hor c'hraban, ni a zavo stancoc'h hon treid evit ober ar pez ne blij ket nemeur da dud seven eveldeoc'h, ni a telo da chatal, da vleizi; ha pa vanc' deomp ar boued, bara hag arc'hant var ar meaz, pa vezimp skuiz o paca boue lusien, marc'hadourien, ni a ve menact buhan aoualc'h da lammed var ar bara guen, ar bara guiaz e kear, d'en em loja en tiez brao, er c'hamprou caer e kear, da lakaad en dro deomp dillad an aotrouez, ha da ober eun toullad traou a gavomp c'hoaz dizoare, keit ha ma selaouomp hor beleien, ha ma kendalc'homp da vond eur veach an amzer en eul leac'h distro na blij ket d'an oll.... memez

e kear, hag a vir goucoude na rear nousped ar droug, nousped an dishonestiz, al jaeronsi, a ra kement a vad d'ar goazed, hag a zionali ker brao ar marc'hed an mer- c'hed koz, ar gragez evel ar merc'hed iaouank, me fell d'in lavaret al leac'h a glasomp evit anzaoc'hor pe he- jour, hon troidellon, ha lakaad var he zu hote houstians pa vez trubuillet abalamour da eun darn caozion a vezo bet lavaret re vihan, da eun darn oberou n'ho gueler ket nemeur var an dispali. C'houi etrezoc'h, tud kear, a brezeg meur a vech, marteze re stank an oll, ez euz da zionall oc'h kouer pa z a d'ar foar d'ar marc'had, pa laka he dreid en eur stal mezer, pa vez arc'hant hag aour dirak he zaoulagad.... e kay guelloc'h, herroc'h kemered eget prena, paca.... ec'h oar re vad lakaad, sila he zorn e godel eun all, hag hen o lond marteze euz a govez, hag hen o paouez ober he bask.... Mad, mad, aotrouien, evit ma vezot c'houi furroc'h en ho tiez, en ho staliou, evit ma vezimp ni furroc'h var ar meaz en hor parkeier, eur veach c'hoaz lezit ganeomp, kroskit en hon touez ar feiz kristen, kement ha ma hellot, ha roit deomp bep skouer vad evit ma vouezimp guelloc'h petra hon euz da ober.

Me vel en dro d'in a bep seurt tud, a bep seurt tiage- siou, hag e peb ti, oc'h heul peb den me vel poan, dis- plijadur, muioc'h ne nebeutoc'h gant an amzer. Ar virionez eo goucoude, mar d'euz c'hoaz tud euruz, tud en ho eaz var hor meziou, an dud-se peurluvia eo ar re ho d'euz mui a respet evit Doue, a lez gant an Aotrou Doue ar renk kenta en ho c'halon, en ho zi, e peb leac'h hag e peb tra; a ro skouarn da gomzou ho beleien, a ia aketuz var ho daoulin dioc'h ar mintin ha dioc'h an noz; a ia d'an oferen bep sul, d'ar gousperou hep faot, da govez dioc'h ho izom; a ra vijel da vener ha da zadorn; a anavez, a heuil lezen ar c'horaiz; a vel en ho ziegez oc'hpenn korfou da vaga, da viska; a oar hag a ziskouez ez euz eno c'hoaz cneou da zavetei, evel ma lavarer dezo en iliz, koulz pa vez an Aotrou Cure, evel pa vez an Aotrou Person er gador. An dud euzusa var ar meaz eo peurluvia ar gristenien euz an orin goz, a velet guec'hall ker stank e peb parrez, hag a ia sionaz! euz an ell bloaz d'egile var rabad!.... eo ar pennou tiez, ar mistri, ar vestrezed, an tadou hag ar mammou a feiz, a vez var ho zro banden vraz a vugale; a vel e peb crouadur, mab pe vere'h, a zeu en ti gant an amzer, kel lieza denzor, a eal roet dezo gant Doue da zionall, da ziorren evit ho mad hag he c'hloar; a oar eo ken eaz da Zoue maga dek, daouzek crouadur en eun ti, evel daou, tri hepken, evel eur penher sot, guella a oar eo fumi hag eva banneou melen, evel eur benherez magn, he oll affer a zo en em sicha, e'honeza he bruched, lueha oc'h ar goazed, hag a hell, euz an eil dervez d'egile, beza cailaret goasoc'h eget eun torch listri, beza c'hoaz a re e ti he zad hag he mam, discar he zad hag he mam er bez gant ar vez, ar glac'har.... araok ar mare.... Brema c'hoaz, tud chentil, evel guec'hall, an tadou hag ar mammou euruz, an tadou hag ar mammou respetet, enoret, eo ar re a gont var zicour an Aotrou

Doue, var madelez an Tad braz a ro he dam memez d'al labousik nevez-dinadet, na n'ho dieuzket aze ve en ho zi re a vugale evit ranna ho ziegez d'ho beved, goude ho maro. Hijo, c'hoaz, evel guec'hall, an tadou hag ar mammou, a vez av outhi, eo ar re a vel bugale niveruz, iaouankizou, gallouduz, oc'h ober an dro d'ho zaol er gear da vare ar pred, balvez tennennat zam diyar ho c'hein er park, a yezi lezet da ober ho c'houk mintin en ho ioul, a vez espernet dezo ma ma heller al labouriqou tenn, an trojion hec'h spanduz, a vez heuillet d'an iliz evit an oferen, ar gousperou evel en distro euz an iliz d'an gear dazul, da c'honel gant paotred iaouank, gant merc'hed iaouank a benni ad galon, a skiant, dre ma'z iul, en memez amzer iaouankizou kristen, kristenien evel an tad, ar vamm ho dieuz bet dirak ho daoulagad azalek ho bugalec'h, evel an tad, ar vamm ho d'euz bet he c'hentelion muioc'h dre ho oberou mad eget dre ho c'houzou fur. Ah! tud kear, ma vouezac'h pegement a vad a ra deomp ni labourerien, da a boan, tud sammet pouner, tud guisket paour, tud guisket groz, tud a ia er meaz dindan an oll amzeriou, anad, kered ha servicha hon Doue, gouzoud eo bet hor Zalver gant en eur c'braon, ha marteze var eur groaz; eo bet Jezuz labourer, den a vicher eveldeomp, en d'euz eveldeomp trempet he vare garbaroc'h ouezen euz he dal, kaoud er Vere hez Var, eur vammor ken tener, ken truezuz; klevet da zul gomzou Doue, gant hor beleien, mond da skanvaad eur veach an amzer hor spered e cadar ar binjen, en eur reid a euz tad carantezuz anaoudegez euz hor poanion, euz hon trubuilhou; maga hor c'halon, klevet hon anec'h, ma taol hor Zalver.... Nan, ne ket e hou, eo a na dalc'h aoualc'h, kriz aoualc'h, evit dont da lara ar feiz en hor c'houstiansou dre gomzou ken danjeruz, da ober gaabit a lod ac'hanoc'h, euz al labourerien, a ra c'hoaz evel eo no surezed, evel ar grac'hed koz, dioc'h m'ho hanvil hoc'h e uuan; a gar pidi, sacramanti, ober pinjen, er guelloc'h ho fec'hajou, selaou ho beleien, selled oc'h ar groaz, ed ha sonjal er baradoz en eur c'hounid ho zam bara var an douar. Ha pa na rale ken vad deomp ni hor beleien, hag hor relijion, nemet ober ac'hanomp tud honest ab var ar meaz evel e kear, ha pa na ve nemetignac' herrez kement a brezeger deomp, en hon ilizou, e houi, tud de kear, evit ma hellot gurza easoc'h, beza paet guelloc'h. Ho ha beza surroc'h euz ho tra, e houi a defe e hoaz, beza gant ar re genta o terc' hel, o starda ar feiz, e mesk al labourerien.

DAN AN DALL. Paskou he Roched gwenn.

Me a zisplego brema d'e-hoc'h, hugale, marvailloz spountuz a zo bet savet gant va zad koz da c'hoarzin goap euz a eur goaz ha ne grede ket mont el leac'h ma veze teval na mont er meaz e-pad ann noz, war zigarez m'en doa gwelet eur hugel-noz o sacha chadennou war he lerc'h. Ar marvailloz-ma a zo mad ive da lavaret d'ar re a gred e tistro ar re varo er bed.

DIZIQU, 1 Eost. — Sant Per er chadennou.
 DIGUENER, 2. — Sant Alfons Mari Ligori, Escop.
 DISSADORN, 3. — Deis ma voue cavet corf Sant Stefan, kenta merzer.
 DISSUL, 4. — Eisevet sul goude Pantecost. Sant Dominic.

Abostol ar zul :

Va breudeur, dleourien omp, ne ket d'ar c'hig evit beva ervez ar c'hig, (mes da speret Doue) ; Rag mar bevit ervez ar c'hig e varfot ; ma lakit avad oberou ar c'hig da vervel dre ar speret, e vefot.

Rag kement a so poulzet gant speret Doue, a so bugale Doue. E guirionez ne ket eur speret a sclavach eo oc'h eus rec-veit evit ho tere'hel ato var aoun, recevet oc'h euz ar speret dre behini omp great bugale da Zoue ha dre behini e criomp outhan : va Zad ! P'eo guir Speret Doue he unan a rent testeni d'hor speret ni ez omp he vugale. Mar domp eta bugale da Zoue, ez omp ive he heritourien ; heritourien da Zoue, kenheritourien da Jesus-Christ hon Aotrou.

Lizer Sant Paul d'ar Romanisted VIII. 12. G. M.

KELEIER.

Etouez ar vissionerien eat a nevez zo d'ar broiou pell da brezeg an Aviel, e cavomp an tad Guerin euz a escopti Guened, eat d'an Afric, hag ar c'hoar Santez-Oportuna euz a escopti Kemper, eat da vission Sierra-Leone.

E Departamant ar Vandec al lezvarn (cour d'assises) a dlie digueri ar pemzeg a vis gouere ; mes n'eus ket bet a izom d'he zigueri ; n'oa den-cablus da vont dindan al lez-varn.

Kementse so a dra stir eur veuleudi gaer evit tud ar c'harter-ze.

Distro euz a Rom, Aotrou Escop Sant Brieuc en deus roet an urziou dissul tremenet. Great en deus seis beleg, daou avieler varnuguent, eun abostoler varnuguent ; unnec cloareg o deus recevet an urziou bihan, ha pemp ha daounguent curruen ar glouer.

Eur vedalen a honor so roet da Alan Fransez Trolen, euz a Ergue-Gaberic, evit heza, e miz Kerzu diveza, saveteet eun den a iea da veza beuzet e ster ar Jet.

E ti-scol Santez Mari, (hanvet guechall al Likes) e Kemper, e roer er bloa-ma ar priziou d'ar vugale ar pemp varnuguent a vis gouere.

Euz an Naonet eus diblaset daou zen iaouane evit mont da zervicha ar Pap. Ouspen-ze en Escopti Naonet coulz hag e Escopti S. Brieuc e receiver dalc'h mad pemp cant lurion evit lacat zouavet e servich an Tad Santel.

An Tad Santel ar Pap en deus hanvet Arc'hescop a Sens an Aotrou Bernadon Escop Gap, hag Escop a Oran en Aljeri an Aotrou Callot, ehaloni a honor ha person a barrez ar Pastor mad euz a Lyon.

Ne ouzon ket hag hen en deuz aoun ar c'holera rag mogued an italianet. Credabl eo n'en deus ket. Da viaua e leverer e ra distruch en Enez Sicil. En em skign a ra dre an enez oll couls lavaret, hag ar pez zo goassa eo ma zeuz eun dienez vraz en enezen-ze.

En eur barrez e Departamant an Ardech ar gurun e deus lazet, var eur menez, eur messaer ha daou c'hant tri danvad en eun taol.

Ar guiniz hag ar c'herc'h a ia e pep leac'h var guerat, dioc'h ma lavar *Cazeten ar Meziou*. Guelet a rer brema eo bian an ed coz so etouez an dud, hag an eost n'oar ket sur d'he zestum mad. Falloc'h e vezo evit na zonjet. An amzer so gleborog eun nebeut so. An edou druz a goez hag a dor ; lod all a goez mergl varnezho. Ne dleer ket eta beza souezet evit guelet an ed o vont var guerat ; ha mar deu da laoscat varnezhan e fin an eost evel ma custom ober peur liessa bep bloaz, eo credabl ne zaleo ket d'en em zavel adarre.

A hent all e leverer ez euz eun eost caer er Stajou-Unanet en Americ, hag ac'hano, ep mar, e vezo digasset calz ed-er broiou-ma.

Ar memes *Cazeten* a lavar d'an eosterien, dre ma vedint ho ed, he lacat a zavadelou evel ar guinis du, eleac'h he lacat a zramou var an douar evel ma rer peurvuia. Ar greun a jom rontoc'h hag al liou a jom guelloc'h. Kentoc'h ive e c'haller he droc'ha, da lavaret eo, ne ket red gortoz e ve ken dare evit he vedi. Euz an ed guenn e c'heller hag e tleer ober savadelou cals brasoc'h evit euz ar guinis du.

Marvailou. — En dez all ez oa pardon e P... Eun nebeut tud iaouang a iea da gaout ar Mear, da c'houlen beza lezet da gas taboulinou gantho evit ma vije gaoc'h ar gouel :

— Me ho les, eme ar Mear, da gas taboulinou ganeoc'h ; ia, gant ne reoc'h ket a drouz !

Eun diekerer hag e deuz eun azen evit cas leaz e kear a gavaz eun dervez he matez o tilosta ar bourrig kez, o tenna he lost digantha reunen ha reunen. Ec'h ellit cridi ez eas droug er vestrez hag en em lakeas da c'hourdrouz he matez. Mes houma a respontas ken dieheg ha tra : C'hui emezhi, a laca bleo all da greski ho pleo hoc'h unan, ha me credabl, ne ket pec'het din ive lacat lod euz a lost hema da greski va re ! G. M.

PRIZ AN EID.

KEMPER. — 20 Gouere.		PONTNABAT. — 18 Gouere.	
<i>Priz ar c'hant tur.</i>		<i>Priz ar c'hant tur.</i>	
Guinis....	45 lur, 64 c.	Guinis....	45 lur, 94 c.
Segal.....	44 lur, 87 c.	Segal.....	40 lur, 83 c.
Eiz.....	9 lur, 78 c.	Eiz.....	40 lur, « c.
Ed-du....	8 lur, 89 c.	Ed-du....	8 lur, 75 c.
Kerc'h....	8 lur, 62 c.	Kerc'h....	9 lur, 50 c.
Avalou-douar	4 lur, 23 c.	Avalou-douar	4 lur, 23 c.

Ar Gerant: AR. DE KERANGAL.
 Kemper, moulet gant AR. DE KERANGAL, Moulet an Escopti.

FEIZ HA BREIZ,

KELOU A BEP BRO, HA KENTELIOU VAR BEP TRA,

DIGASSET BEP SUL

Da guement Christen a goms ar brezouneec.

Eun Abonnamant d'ar Gazeten a goust :

Evit eur bloas.....	DAOU SCOUET.
Evit c'huec'h miz.....	EUR SCOUET.
Evit tri miz.....	C'HUEC'H REAL.
Eur gazeten ebken.....	DAOU VENNEC.

Ar bacamant a dle beza great araog caout ar gazeten.

ALIOU.

Ar scrijou a ve c'hoant da lacat er gazeten a dleer da adressi oll d'an Aotrou MONVAN, Beleg e Kemper.

Ar pacamanchou a dleer da adressi d'an Aotrou SALAUN, ebken. An abonnamant a guemerer e ti an Aotrou SALAUN, librer, ru Kereon, e Kemper.

KEMPER, 3 Eost 1867.

Dissadorn da bardaez oll gleier Kemper a ioa e bole. An Aotrou'n Escop a zigoueze er guerar o tistrei euz a Rom goude beza great he veach e lec'het mad hag ep darvoud ebet. Kemperiz a ioa eat a vanden d'ar *Gar* evit he ziguemeret, hag ar re ne voant ket eat beteg eno, a ioa goloet an hent gantho azaleg an hent houarn beteg an escopti ha zoken var dachen Sant Corintin ; rag oll o devoa mall da velet ho escop distro en ho zouez. Kemper a eller da lavaret a ioa eno oll, beleien ha tud fidel evel bugale o c'hortoz ho zad, evel denvet fidel o c'hortoz ho fastor. Antronoz, da bron an oferen bred, an Aotrou'n Escop so pignet e cador ar Gatedral evit lavaret eur guer bennag divar benn he veach. Da guenta en deus trugarekeat Kemperiz euz ar prez o doa laket da vont a ziarben dezhan, euz ar joa hag al laouenidiguez o doa diskuezet oc'h he ziguemeret.

« E Rom, eme an Aotrou'n Escop, e vezan ato diguemeret mad. Hon Tad Santel ar Pap am diguemer a greis calon, a ra lit din, ha kementse abalamour deoc'h. E Rom eo anavezet seiz Breiz-Izel ; gouzout a rer peguement e talc'her mad ama d'ar relijion, d'an honestiz ; peguement oar troet ama da ober vad, da rei d'ar re izomeg ; peguement oar douguet da herpel ha da zifen cador Sant Per ; ha setu perag oc'h Escop a vez great ker caer diguemer dezhan e Rom. A hent all c'hui a gar kement ar Pap, Vikel Jesus-Christ, ma na gaf ket deoc'h ho pe morse great avoalc'h evit diskuez ho carantez d'oc'h Escop pa zistro euz a guichen ar c'henta pastor, euz a guichen ho tad muja caret. Bevech eta ma zan da Rom ez eo evidon eul levenez hag eur bijadur nevez. »

Evel a veler, an Aotrou'n Escop a gas oll d'hon Tad Santel ar Pap, petra bennag m'en divije gallet, ep fasia, dere'hel eul loden evithan he unan.

« Bet oun e Rom, eme an Aotrou'n Escop, hag eno, ar pez a laca souezet ar re a ia di, ne de-ket an traou

caer ous pere e seller e lec'h-all. Ne deo ket an ilizou, an tiez, ar paleziou, petra bennag ma zeuz eno euz an traou caer-ze muic'h eguet e leac'h all ebet. Eno ar zell a zo evit ar Pap epken, evit an den-ze, coz dija, hag a veler ato stard ha ferm en despet da guement a stourm outhan ; an den-ze a so oc'h enebi outhan Rouanet, Prinset, tud gouezec, tud askiant, tud desket bras var ho meno, hag a zalc'h penn dezho oll petra bennag ma cafet e ve dinerz ha dic'hallout. »

« Hirio cals tud a fell dezho beza ep Doue ; c'hoant o deffe ne ve Doue ebet. E Breiz-Izel, e Frans zoken, petra bennag a oulet da zonjal anezhi avechou, mes ama dreist oll en escopti-ma, e douar S. Corintin, a drugare Doue, ne glasker ket beva ep Doue. Ama ez eus feiz, ama e talc'her mad da gredennou hon tud coz, ama en em gaver enrus da zalc'her mad d'ar relijion, ha setu ar pez a ra vad da galon oc'h Escop. Hoguen an dud dizoueze ma comzan anezho o defe c'hoant da jench goure hemennou Doue. Fallout a rafe dezho ober ho lezen ervez ho guiz ha teleur lezen Doue a gostez, hag o defe c'hoant da lacat ar Pap da vont a unan, da vont a eun tu gantho. Lavaret a reont dezhan eu eun doare bennag : Grit evel d'omp ; hor sicourit da jench an traou-ze oll, ha neuze ni en em unano ganeoc'h ! En em unani ? Ar Pap a voar ema etre he zaouarn creden an oll gristenien, ar virionez ; ema etre he zaouarn ar reolen a dfe pep den da henilla ; ema etre he zaouarn frankiz pe liberte an oll bopliou ; ia, frankiz an oll dud, rag morse ep heuilla gotre hemennou Doue ne vezo e guirionez tud eur vro libr ; mar greont fae var lezen Doue, o terri eur chaden, e lakeont n'ousket pet chaden all d'ho liama. Larcoc'h ez in ; gouzout a ra ema etre he zaouarn ar pez a hanver hirio mont var araog. Morse ne dear var araog ep an iliz santel, ep Jesus-Christ a so en Env hag ep he Vikel a so var an douar. — Mes ne zavit netra nevez, a leverer dezhan ; nan, mes kenderc'hel a ra kement a zo etre he zaouarn, mont a ra var araog ep coll netra, hag ar re a fell dezho mont var araog ep Doue, o clasc destum

ne reont nemet sclabeza. »

« Guelet on euz eta an den burzudus-ze. Guir eo eno eour Pap, Vikel Jesus-Christ eo a dleer ato da velet, ha ne ket an den a c'halver Pii Nao. Gouscoude an den-ze so ker vertuzuz, en deus stourmet kement evit an iliz, en deuz eur galon ker mad, ma ne aller ket miret da gaout ar galon teneeret pa-dosteer outhan. »

Ama calon an Aotrou'n Escop a ioa teneeret ive, hag eur berlezen bennag zo deut da luguerni en he zaoulagad, hag ar re her silaoue a voa ive teneeret ho c'halonou, ha meur a veraden zaelou so bet scuillet.

« Guelet on eus cador Sant Per, ha touchet on euz outhi; ar gador-ze bet da guenta cador-zoug ar senator Pudens, ha var behini eo bet azezet Prins an ebstel, hag en deus prezeguet ar memes guirionezou a brezegomp ama deoc'h hirio; ar gardor-ze var behini eo bet azezet an oll babet abaoue Sant Per bete brema ez eus daou c'hant vloas ma voue laket a gostez evit he miret guelloc'h, hag a so bet laket brema da ziskuez da guement hini so bet e Rom. Ar gardor-ze so eun dra dister, mes diskuez a ra selear penaus trou Sant-Per hag ar virionez a brezeguer divarnezhan ne jenchont morse. »

« Guelet on euz, eme c'hoaz an Aotrou'n Escop, ar pemp cant escop-ze deut euz a bevar c'horn ar bed da Rom var eur sin epken aberz hon Tad Santel. Ar Pap n'en doa great gourc'hemen ebet d'comp, mes eun tad eo hag en doa diskuezet en doa c'hoant da velet he vugale en dro dezhan; ha n'omp ket chomet da vare'hata. Lavaret or boa deoc'h araog mont e vije bet calz aescoc'h deomp chom er guær; hoguen ar blijadur da velet an Tad Santel, ar blijadur da receo digneneoc'h eun diguemer evel a rit deomp pa zistroomp euz a guichen ar Pap en divije hon lakeat da c'houzaon c'hoas muioc'h a skuisder. Rag petra bennag ma ema escopti Kemper er penn pella euz a Frans, ha ma zeo eur veach hir mont ac'hann da Rom, petra eo ar hoan on eus ni bet e scoas lod euz an eskeb all? Guelet on euz eno eun escob deut var an oad, hag en doa great daouzeg cant leo a dreus broiou gouez e compagnunez eur vanden pire'hirinet ha marc'hadourien; guelet on euz eun all hag en doa great tri c'hant leo var droad, a dreus meneziou ha gouezeri, araog caout eul lestr var behini e chome dezhan nao c'hant leo vor da dreuzi, ha kementse couls lavaret dihourvez a bep tra. Bugale vad ne zellont ket oc'h ho foan pa vez hano da ober plijadur d'ho zad. Carout a rafemp e ve kementse eur skuer evit pep tieguez christen, e ve cavet, e pep tiad tud, ar memes sentidiguez, ar memes prez da ober plijadur d'an tad. Ia, ma sentfe evelse var eur sin, e pep ti, ar vugale oc'h tad ha mam, ar religion hag an holl vertuziou a jomfe stard ha ferm etouez ar gristenien. »

Ne allan ket merca ama kement en deus lavaret an Aotrou'n Escop, rag va fennat scrit a ve re hir. Mont a ran eta da verca an nemorant e ber gomzou.

Lavaret en deus deomp an Aotrou'n Escop en doa comzet oc'h ar Pap, euz he escopti, euz he veleien hag euz an oll dud fidel euz he escopti, euz a guement en

deus great hag en doa sonch da ober, evit caout he ali hag he sclerijen; en eur guer comzet en deuz outhan evel eur map o reata cont d'he dad euz a guement a zell outhan. Goulenet ha bet en deus bennoz ar Pap evit he oll escopti, evit kement ene a zo en he garg, hag evit kement a aparchant outho.

Ama, o lavaret c'hoaz eur goms divar benn Pii Nao, en deus great deomp eur gompazeron en doa clevet eun escop a Frans, escop Tul, oc'h ober e Rom, etre ar Pap hag an impalaeret romen. Ar re ma n'o deus great nemet traou hag a zo mez comz anezho, n'o deus great nemet sclavet; ar Pap a ra sent. Evit guir ne ket ar Pap a ra ar zant, mes discleria a ra p'eur en deuz eun den meritet dre he zantelez, beza discleriet guir zervicher da Jesus-Christ; ha Pap ebet n'en deus labouret mui da ganoniza sant evit Pii Nao.

Lavaret en deus deomp goudeze e voa bet o tremen tri dervez e Loret, e kichen ti ar Verc'hez, an ti eleac'h ma zeo Map Doue en em c'hreat den. Ha pe guer ber emezhan, on eus ni cavet an tri dervez-ze! Eno en deus laket dindan brotection Mam Doue he escopti, oll dud he escopti, beleien ha tud fidel. Pedet en deus Mari d'hor benniguen, da guenderc'hel ar feiz en hon touez, ha da ober deomp dere'hel stard d'hor c'hastmou christen.

Erfin en deus lavaret en devoa guelet, en eur zont d'ar guær, an aoter gaer a dle beza laket er Gatedral, hag a dle dont da Guemper da fin miz here.

Araog disken euz argador, an Aotrou'n Escop en deus roet ar venediction aberz ar Pap, gant induljans plenier.

Setu aze, e kement ha m'am eus gallet delc'her em memor, eur skeuden euz a brezeguen an Aotrou'n Escop, prezeguen hag a so bet silaouet piz, hag e deus great vad da galonou eur bopl niveruz a voa oc'h he zelaou.

G. M.

An eskibien so bet e Rom o deus diskuezet lod anezho calz a ijin o rei d'an Tad Santel an ofransou euz ho escoptiou. Eskibien ar C'hanada o deus roet d'ar Pap eul lestr arc'hant labouret caer. Evit lest e gouelet al lestr-ze ez oa peziou aour, hag an doare camprougou zo enha, a voa ive leun a beziou aour. N'em eus ket izom da lavaret e tigase al lestr-ze da zonch euz a vag Sant Per.

Eun Escop coz a ica e cambr ar Pap, eur vaz hir ha teo gantha oc'h en em harpa. Lavaret oce dezhan e tlie lezel he vaz e kichen an or; hoguen an Escop ne felle ket dezhan lezel he vaz var he lerc'h. Ar Pap a glevazan tamig tabud a ioa e kichen an or, hag a lavaraz he lezel da vont evel ma carje. Neuze an Escop coz a deas beteg ar Pap, a lavaraz dezhan oa paour he escopti, ha n'en doa ken da guinniguen dezhan nemet he vaz. Ar Pap a voue souezet eun nebeut; cregui a reaz er vaz, ha pa velas pe guer pouner oa e velaz ervad oa eur vaz aour a guinniguet dezhan.

Aotrou Escop Limoja gassas gantha da gaout ar Pap beleg leanezed ar Pastor Mad. Hema a roas da Bi Nao

eur c'hassedig, aour enha, hag a lavaraz: « Setu aze ar pez o deus savet leanezet ar Pastor Mad, eul dinen Sant Per. Al leanezet-ze so paour; ne allont touch oc'h netra euz ar pez zo d'ar gouent. Hoguen he bleo o deus trouc'het ha guerzet, ha va c'harguet o deus da zigas deoc'h ar priz anezho. »

O clevet-ze an Tad Santel a deue an dour en he zaoulagad, hag ar re a voa eno ne eljont ket miret ive da scuilla daelou.

Eun itron euz ar Brezil dignemeret e ti ar Pap a ioa oc'h he heul daou zervicher ha gantho pep a alc'huez bras divent. An daou alc'huez-ze a voa unan anezho en aour hag eguile en arc'hant, hag a voa eur skeuden euz a alc'hueziou an env roet gant Jesus-Christ da Zant Per ha d'ar pabet var he lerc'h.

Eun escop, vikel abostolig euz a Nankin, er Chin, n'en doa guelet morse ar Pap. Pa voue casset da gambr an Tad Santel, en em lakeas var he zaoulin var an treuzou hag e save he zivrec'h varzu Pii Nao en eur lavaret: *Tues Petrus!* C'hui eo Per! — Deut d'am c'haout, va breur, eme ar Pap. Mes an Escop a lavare adarre: *Tues Petrus!* hag a icas var he zaoulin bete vikel Jesus-Christ. Ar Pap her savaz, her moustras var he galon hag a vescaz he zaelou gant he re.

G. M.

O velet eun assemble ker caer evel zo bet e Rom, kement a eskeb, a veleien hag a gristenien vad oc'h en em zestum en dro da Vikel J. C., lod euz an dud difeiz, a zispac'herien an Itali ne allent ket cousket. Dreist oll unan anezho hag a rer Garibaldi anezhan, hag a so maruze anavezet gant calz euz ar re a lenno kementma. Garibaldi ta ne elle serra lagad. Petra, kement all a dud en dro d'ar Pap, hag hen, eun den evel dhan, den en dro dezhan! Sonjal a ra eta destum ar ganfardet euz ar memez davez gantha evit ober ive eun assemble caeroc'h c'hoas mar galjet evit hini ar gatoliked.

Setu eta hen o cas kemennadurez da oll dud difeiz an Itali, d'ar franc-mansonet, d'en em gaout e Napl da eun dervez merket. Ne ket eur *Sened* a dlie beza eno pa vije destumet a vanden kement a lepot so er vro-ze ha n'o deus na feiz na Doue? Napl a dlie beza treac'h da Rom! Dont a ra an dervez. Digueri a rer franc doriou ar zal eleac'h ma tle en em gaout an dud dispar-ze. Ar zal, credabl, ne vezo ket braz avoalc'h evit ho diguemeret oll, evithi da veza hir ha ledan. Gouscoude an amzer a ia en dro, ha den ne zigonez couls lavaret. Ar zal vraz a jom goullou. Goude beza gortozet pell avoalc'h, an nebeudig a so en em gavet a fell dezho gouzout pet int, hag e cavont... tregont! Ne ket eur *Sened* e voa hennez?

Ha c'hoas ma o divije gallet en em glevet. Setu unan anezho o cas he zorn da stanca he fri, rag eur c'hoaz a zante ha ne ket c'hoaz ar roz oa. An eol a zeve er c'hleuzeuriou a flierie. Ho pet sonch al labouset noz-ze n'em em gavont a vanden nemet en noz. Hoguen an hini a voa bet carguet da sclerat ar zal, eleac'h prena eol mad, en doa kemeret eol fall, eol-mean evit he gaout

guelloc'h marc'hada. « Petra, eol-mean, evit unan anezho; tud evel dompni a dlie devi eol olivez en hon c'hleuzeuriou. »

Eno neuze e savas tabud. An hini en doa prenet an eol a ioa eno ive ha ne lavare guer. Hoguen soudan e voue savet nao varnuguent loa-vanson a enep dezhan. Lod a lavare zoken he zevi. Ar paour kez den, kenta ma c'hellas, en em silaz er meaz ac'hann, hag ar re all goude calz a dalabag, en em dennaz ive pep hini en he avel. Ha setu aze penauz e tremen eun assemble etre an dud difeiz; setu aze pebez unvaniez so etrezho.

G. M.

MERZERIEN AR JAPON

(Eisvet pennad)

Etouez ar vissionerien a voue merzerien er Japon, ar brudeta eo an tad Charles Spinola, a gompagnunnez Jesus. Guinidig oa a Jen hag a hignez huel. Ar c'hoant en doa da rei he vuez evit ar feiz a reas dezhan goulen mont d'ar Japon, ha roet goue he c'houlenn dezhan. Labourat a reas en dra c'hellaz, hag e c'hounezaz eun niver braz a enteoù da Zoub. Ouspenn he skuisder, e cundue c'hoaz eur vuez tenna hent all.

Ar Japoniz hendakeaz er prizon eleac'h ma voa oc'h he zioal tud criz gant pere en devoe calz da c'houzaon. Ne felle ket dezho zoken nei dezhan eur banhe doue da derri he zec'het, hag he gentanet gant an derzien. Hoguen Doue ne ziles morse die zervicherien; dre ho c'hras e scanvea poan ar merzer, hag e rea dezhan caout levencz er chadennoù. Setu ama petra lavar he uban en eul lizer scifet ganthan en he prizon.

« Nag hen a zo dous evidon gouzaon evit Jesus-Christ? ne gavan ket a gomzou ere avoalc'h evit rei da anaout ar pez a zantan, dreist oll abaoue ma emamp en touf douma eleac'h ma vevomp ep tam. Ners va c'horfa ia kuit, mes va levencz a gresc dre ma velan e tosta ar maro. Pebez eurvad evidon ma c'helfen da basc, cana en env gant ar re euraz ar c'hantie Alleluia! »

« Ma o pefe tanveet emezhan en eul lizer d'he guenderf, an dousder a scuil Doue en ene he zervicherien, n'o pefe mui nemet dispriz evit oll draou ar bed. Dont a ran da veza diskibl da Jesus-Christ abaoue m'e maoun er prizon o c'houzaon dre garantez evit han. Dic'haouet mad oun bet euz an naou criz am etis gouzanvet; dre ar frealzigiguez dudiuz ha c'hoaz a lakea Doue em c'halon. Ha pa jomfen meur a vloazier prizon, e cavin ber an amzer-ze, kement a c'hoant am eus da c'houzaon evit an hini a deu d'am faca ker mad eus va foan. Bet oun clan e meur a c'his; dreist oll em eus bet eun derzien hag a so padet eant dervez ep ma c'helfen caout louzou ebet. Epad an amzer-ze e santen eur joa ha ne ellan ket da verca deoc'h. Ne vouien ket petra rean, hag e cave din edon er barados. »

An tad Spinola a voue condaonet da veza devet, hag ar c'helou-ze a zigasas dezhan eul laouenediguez ar vrasa. Azalec neuze ne eane o trugarecat Doue euz a eur c'hras

ha ne gake ket dezhan e vije din anezhi. Euz a Omura eleac'h ma edo er prison, e voue casset da Nangazaki. Laket e voue d'ar maro var eur menez tost da guen, ha gantha no gristen ha daouguent all, a voa en ho zonez nao Jezuit, pevar a urs Sant Fransez ha e' huc'h a urs Sant Dominic. Ar re all oia a voa christenien fidel. Pemp varnugent a voue merzeriet dre an tan, hag ar re all a voue dibennet. Etouez ar re-ma, an tad Spinola a anavezast tost dezhan Izabel Fernandez, intanvez Dominic Jord. E ti ar gristenez vad-ze edo pa voue croguet enha pevar bloas diaraog, ha badezet en doa eur buguel nevez ganet dezhi ha roet dezhan an hanô a Ignas. Ar buguel a voa adre he vam, hag an tad Spinola n'her guete ket. Aouñ en devoue na vije bet euzet ar buguel evit miret na vije laket d'ar maro.

Peleac'h emma Ignasie, emezan da Izabel? Petra oc'h eus-hi great anezhan? — Ema ama, eme ar vam oc'h he guemeret etre he divrec'h; Doue ra viro em bije elasket miret outhan da gaout ar gurunen a verzerinti! Neuze e lavarast d'ar buguel: va map, setu aze ho tad, pedit-hen d'ho penniguen. Kerkent ar buguel en em lakeast var he zaoulin, a groachast he zaouarn hag a c'houlennast oc'h an tad he venediction. Ober a reast kementse en eun doare ker coant ma tennast varnezan daoulagad calst euz an dud a voa o sellet, hag e savast trouz ha goelvan en ho zonez. Kementse a reast aoun d'ar vourrevien hag a reast dezho en em hasta da ober ho mieher. Dioc'hiu e voue guelest daou pe dri benn o coeza hag a ruillas bete freid Ignasie. Ne voue ket strauillet evit kementse. Dont a rejor d'he vam, hag ep chench liou e velast ive he fenn distaguet. Erfin gant eun ners calon calz en tu all d'ar peza eller da c'hortost dioc'h eur buguel en oad-ze, e recevast he unan taol ar maro.

Kerkent ha ma voue merzeriet ar vanden guenta-ze, e voue laket ho fennou a zirag ar re a dlie beza devet, hag e voue c'hoezet an tan. Pemp troatad varnugent edo an tan dioc'h ar penillou, ha laket oa ar c'heuneut en eun doare ma thie beza pell araog mont beteg ar verzerien. He laza a reat zoken pa gavet ez ea re vuñ. Da c'hortost eta an tan da zout beteg enho, an tad Spinola a roast an absolven da Lucia Fraitez a ioa staguest eh he guichen hag a c'houlennast ar c'hras-ze digantha. Neuzo o trei oc'h an ofiser carchet da lacat ho merzeria, e lavarast dezhan gant eur vouez ere e thie guelest brema petra glastke missionerien an Europ o tout d'ar Japon, hag e thie sonjal, oc'h ho guelest kel laouen e creiz eun tourmant ker criz, e creiz an tan, ne ket evit clase madou, mes evit clase savetei eneoù eo e voant deut di. — Comz a reast goudeze oc'h ar re a voa o sellet: « An tan ma a ia d'hoñ devet, emezhan, ne deo nemet ar skeud euz an tan gant pelini. Doue a zevo er bed all ar re ne vezo ket falvezet dezho he anaout, pe autramant, goude beza he anavezet, he vezo ket falvezet dezho miret he lezen santel. »

Merzerinti an tad Spinola a badast div heur. Mervel a reast d'an oad a cis vloaz hag antercant, an eil a vis kerzu 1622.

Meur a verzer all a voue c'hoast er Japon er mare-ze. An re am eus comzet anezho eo ar re anavezeta, ar re arudeta. Histor ar Japon a gomz c'hoast a gals a re all; hoguet re bic e ve ho merca ama, hag ez an da echui. chio an pennad serit-ma. G. M.

BUEZ SÂNT VISANT FERRIER.

(KENTA PENNAD).

Ar Zant-man ken brudet dre he vertuz hag he zesca-durez, a voue ganet e rouantelez Spagn, er gear a Valans, an 23 a viz guenver 1347. He dad, hanvet Guillou Ferrer a ioa scrifagnour: he vam, hanvet Constans Miguel, a ioa unan euz ar merc'bed santella ouz he amzer. Cons-goude an daou bried-man a dremenast ar bloa vechou kenta euz ho friadelez oc'h heuil guichen falk ar bed; mez o veza deut da anaout follentez traou an douar, o teujont da jench buez, rag ma c'houient, n'ez-euz evrusted ebet var an douar, nemed an evrusted a gvever oc'carethag o servicha Doue. Skuer ho santelez hag an aluzenou braz a reant, a lekeaz ho c'henvroiz da barlant calz anezho. Beb bloaz, goude beza dalc'het euz ho madou ar peza a ioa red evit dispign an ti; en em vaga hag en em visca, e roent an nemorand d'ar paour, hag er c'his-ze e tenent var ho lignez bennoz Doue, he aneounast ha morse eur vad great, ha dreist-oll eun aluzenou.

Doue a roast d'an daou bried-man eun tiad-mad a vugale, ken potred ken potrezed, hag holl var a levereur, e renjont eur vuez santel ervez ar skuer vad roet d'ez-ho gand ho zad hag ho mam. An daou gossa euz ar bothed a ioa hanvet Per ha Bonifas. Bonifas, leun a spered a deuaz da veza unan euz ar guella alvocaded euz he amzer, hag a zongast eur gark hael er gear a Valans. Mez he bried o veza deut da veryel, en em c'hrast rilijuz dre ali he vreur Visant, hag he c'houic'heguez a ioa ken anet d'an holl, ma voue great superior euz he urs, pevar bloaz goude ma-z-caz en-hi.

Dre ma clasker piz kement a zell euz buez eur Zant, e voue gouelet abred mercon euz an. Eny evit rei, testeni euz ar peza a dlie beza eun deiz Visant. Rag, ere m'edo Constans Miguel o touguen ar c'hrouadur-man, he fried en devoue eun huve. Epad an huve-ze, e crede d'ez-han beza o elevout eur zermou en eun iliz vraz: ar beleg a ioa er gador-zermou, en eur bara he zaoulagad varn'ez-han, a lavarast: « Reza a guemeran, va map, er peza a dle « erruout gan-e-hoc'h. Ho pried a dle, eb dalc'pell, « guenet eur map, hag a vezo, beleg euz ar menez urs « gan-en-me. He suez a vezo, ken santel, he c'houic'he- « guez ken huel, ma teip rouantelez Frans harouante- « lez Spagn, d'hen enori, evel eun abostol hag eur Zant. »

— Divuni a reast en eur veuli Doue, hag en em astaz da gas ar c'healou caer-ze d'he bried. Houman ne voue tam sebezet o elevout kement-ze; hag gouzout a reast, ervez ar peza a dremenast en he c'halon, abaoue m'edo douguerez, e thie an Eny ober eur burzud benag a ken-ver ar frouez a zongue. Constans Miguel a lekeaz eta er bed eur map. Ar brud

euz kinivelez ar c'hrouadur-zeo veza euz dre gear, ha le-keaz ar pennou huella a Valans da vont d'ite velev en he gavel, evel m'az-efot guech all da velet. Sant Iann prest goude m'hen lekeaz er bed he vam Santez Elisabeth. Eun nebeud amzer goude, ar c'hrouadur a voue casset d'an iliz evit beza badezet. E kichen ar mean-font e voue eun dael vraz o clask gouzout peza hano rei d'ar buguel; en divez, ar beleg inonet a lavarast d'ar re a ioa var al leac'h: « Pa ne c'hellit ket en em glevet, me va-unan a seroioic'hen hanô d'ar c'hrouadur: rag-ze, tavit holl; ar zaoulin a vezo hanvet Visant » — hag e feat, dindan an hanô-ze, ar c'hrouadur a guemerast eur vuez nevez en a dougiuz ar vadisiast. Evit ar vam, he loan ne voue ket a braz o veur he buguel: biscoaz buguel essoc'h da sevel; a morse ne reast an distera trouz; morse ne lenne! n'euz o fors elpeoz leac'h e vije laket, ne zanje morse finval, hag eb he zaoulagadigou ken gac ha ken seder a ziskueze da beguement he gonele, peguen d'rid edo stat he galon. O Dian oada c'huet h vloaz, he dud a n'em lekeaz da zeski d'ez-han eun dra benag. Visant a n'em roast d'ar studi oigand kement o zevri ma teuz d'an oad a zek vloaz, da s'vezet pell var he lene han holl vugale all euz he vent, hag euz he oad he zoken kalz bugale all kossoc'h eguet-han. — Dibot e thie he velet o kemer he blijadur nag o c'hoari seroioic'he vugale all ha o pizigouze d'ez-han en em gaout gant-ho, goude beza c'hoarist hag ebattet epad eun ta- chad amzer, er oad d'ez-ho paouez, hag en eur zevel var eun huellen, e lavarast d'ez-ho: « Sellaout mad, bu- ed e gale, ar peza zan da lavarast, ha guelit a me a dle beza a beo un deiz eun prezeguer mad. » Kerkent e reast sin ar vugale, hag en em lakeast da ober eur zermou e guiz pa gant vije he eur beleg en eur gador, hag e roe d'an holl da o hanou ar peza e thie beza eun deiz.

D'an oad a zhouzek vloaz, en em lekeaz da studia ar ne filozof, hag avast a reast kement er skiant-ze, ma lezast eb' amzer, he holl gamaraded scol, pell var he lere'h.

Mez ar peza a ra ar vrassa meuleudi euz ar scoaler iaou- o Jann-ma, eo m'ar thie haz bepred he inossans daoust d'ar inoast d'ar fall a vele aliez dirag he zaoulagad euz a bers obo ar seroioic'he all. D'eo ar voa a glement-ze d'ar gras- ber he d'ar vob Doue d'ez-han ken abred, ha d'ar skuer- so vaden doast d'ar gignand he dud ho doa laket kement a golo ket d'ar scoala ho c'hrouadur var hent ar furnez hag ar- so santelez. Deski a rejont d'ez-han abred, mont aliez d'an o iliz da glevet an oferent da govel, da sacramanti, ha da adori hor Zalver adorabl er sacramant euz he garantez; hag ouspent ne keast d'ar zek d'ez-han peguen tal- vobdec eo evit ar silvid'heze castiza ar c'horf dre ar- beden, ar fun hag ar binijent. Evel-se, Visant a gueme- raz a vianic ar pleg da fun bep sizun da vere her ha da- zedorn. Kement beleg a doue da brezek da Valans, ar scoaler iaouane a zea d'ho c'hevet, ha pa zeue d'ez-ho, en ho sermoniou, comz astaz an tron-Varia, e velet ker- hent d'alon Visant ofredes gant ar joa, kement a leve- nez ar gador galon o sonjal e Mam Doue. Mez kement- ze n'oa netra, e scoaz an daelou a leuske, pa zigoueze burd d'ez-han klevet pe len eun dra ben g var maro ha pas-

sion hor Zalver Iann, ar Vere hez-Vari ha phisioa d'ast- Christ, setu ar penn euz he holl zevosion, shag'ed rei eun testeni selear euz an devosion-ze, n'ed poue d'ar be- eundevet, eb lavarast ofisar Vere hez hag ofis an baskon. — (Euz pennad all eur vech all.)

MISSION SÂNT-THEGONNEC.

Brema ez euz var dro pedit zizun e lennan g Reiz ha Breiz eur pennad serid diast benn eur vission gaer, roet en Ergue-Vraz, n'euz quet pell, er pemzevez diyeza a viz mae, ma em beuz sonj mad, ac em boaz seuh ylla blija- dur o lenn ar pennad serid-ze, ma teump d'an apouent ni ive Sant-Thegonneguz da gaout hor mission, ac eur vission gaer, ma c'hredit parfet. Ha me a zanje d'in, Autrou mad, o pize ive comzet en ho cazeten euz hor mission-ni, ha setu e vize mall ganin, beb sul, pa dene Feiz ha Breiz e ker, tauler va dorn varnezi ac he digori evid guelit ac hi a barlante ive euz hor mission. Mes, caer em beuz gortoz, gueric ebet, ha setu em beuz dis- credet er fin pe zeuz bet casset quelou ebet deoc'h euz hor mission. Ma lachuz eo, rac calz traou mad ha caer a zo tremenet en hon touez, ha ma o divize an autronez beleyen, bet var hon tro, soniet dastum ha lacast anezo dre serid, me assur deoc'h o divize bet eur pennad, ha ne vize quet divalo, da gas deoc'h da lacast e Feiz ha Breiz.

Pa gignast ar re a zo gouizoc, n'o deuz quet gret an dra, e guemeran ar hardizeguez da essast ober ar peza n'o deuz quet gret. Mes me, autrou mad, ne doum ne- meur eustom da vanea ar blaven, ac evelse ez euz risq ne renquin quet an traou-ze deoc'h brao avoale he c'hiz ma co dleet. Ma! Autrou, c'hiu o pezo ar vadelez da ober eun tam quempenn d'am serid, abarz lacast aneza drac daoulagad ho lennerven, mar prizit ive rei digue- mer deza en ho cazeten.

Gan aon ive ne deulle unan bepac da zonzal, compre- nit n'em beffe c'hoant, dre guement-ma, da fougueal va farrez ha d'en em fougueal va-unan da heul, e lavarast dezo o ma ar zonz-se, pell ha pell, braz euz va spered, na ne ma. N'em beuz quen dezo, e guement-ma, credent an oll ac hanon, nemed da zonguenn va breudeur, cristen da veuli ha da garet muoc'h mut an, Autrou Doue, o tis- couez dezo ar mad gret en hon touez dre ar zicour euz he c'hrac, ha d'ho fouiza eun tam, var ar gignast en hent euz ar zelvidiguez. E c'hiz ma lavarast hon tud coz: «

Cuzit, euzit an droe, hoguen d'ezuz ar mad, « Laquit en da bara dirac an oll daoulagad. « Ral o velet an droe an dioc'h daouez. « Mes ar guic'heuz ar mad bepred d'ar mad a zongaz. « Eb dalc'pelloc'h, erogomp en hon erven, eb sel- let en dro deomp, querezomp ganthi betec penn, mar guellomp. « Da zil ar Pantecost, 9 a vis even diveza, e tigoraz hor

mission, ha d'an 23 euz ar memez miz, da zul adarre, e voe clozet. Pemzetez leun evelse eo bet padet.

An tad Forestour — pebez den Doue ! pebez cauzeour dispar ! — a gomzaz deomp, en he guenta sermon, euz ar Spered-Santel, euz an disquen euz ar Spered-Santel var an Ebestel, euz an donezonou a bere e leun-yaz anezo, euz ar jenchamant burzuduz greet enho dre c'hraç oll gallouduz ar Spered Glan. Ac oc'h en em adresi deomp, e lavaraz e vize greet ennomp ar memez burzudou a c'hras gan ar memez Spered-Santel dre ar vission a zigore — galloud ar Spered-Santel, emeza, ne deo quet bianect, — mar digassezemp d'ar mission ar memez dispozisionou mad ma o devoa disquibyen hor Zalver. Ac an Tad a denne quementse oll euz a voeled he galon da lavaret deomp, quen e voamp deja touchet, o cleout aneza. Evidon-me da viana en em zante tene-reet ha troet da ober guëlla ma c'hallzenn va mission, ac e sonj d'in edo ar re all troet evel don.

Ha c'hui a fell deoc'h brema gouzout penauz e yee an traou ganeomp epad ar vission, setu ama ar pez a c'hellan da rei deoc'h evel santimant an oll :

An deizyou a dremene eb na zantemp, quer berr e quevemp an amzer. Pa zeue an noz, e vize mall ganeomp guëlet anezi et abiou ac an deiz o tistroi evid redec adarre d'ar bourg. En iliz e tremenemp couls lavaret hon oll amzer, o selaou comzou Doue, o cana canticou, o lavaret pedennou, o coves hor pec'hejou. An daou dad edo dalc'h mad, a c'heller lavaret, an eil divar bouez eguile, er gador-zermon o comz deomp euz a Zoue, euz ar guiryonezou cristen, euz hon oll deveryou. O ! pegue-ment a draou mad o deus-hi lavaret deomp epad an neubeud devezyou-ze a zilvidiguez ! Ne zeuz artic ebet euz ar Relijion ha n'o deffe displiquet deomp.

Ia, ho daou, an tad Forestour ac an tad yaouane, gan an tadou confessor, o deuz greet ho galloud evid digas ac'hanomp da dud, evid ober sent euz ac'hanomp oll.

Evid an tad Forestour, ne ouzon quet penauz e c'hall herzel. He oll amzer couls lavaret, adalec ar mintin betec an noz, a dremene ganeomp en iliz, o sermon deomp, o cana deomp canticou, o pidi ganeomp, ha pa zis-querne euz ar gador, e-lec'h chom da zisconiza eun tam, e rede d'he confession. Ia atao a vec'h, morse hean ebet.

KELENNADUREZ

d'an daou iaouank.

I.

O c'houi iaouankizou
Berr ho testadurez,
A vez en ho pennou
Frank a skanvadurez,
Klevit ganen an doare
Da gerzed e peb mare
Gant hent an honestiz,
Da dremen mad eun amzer
Nemet re stank na goller,
Amzer ho iaouankiz.

Me fell d'in e karfac'h
Dreist peb-tra hoc'h enor,
Ha jurdik her mirfac'h
Evel hoc'h oll denzor....
Iaouankizou kataret,
Ho hano vez kaillaret,
Hag ho deffe danvez,
Arc'hant braz ha forz gened,
Galloud, izin ha spered,
Bepred a zo lastez.

Eur pez-aour, eur voalen
Ho liou kaer hen kollet,
Eur bod bleun, eur rozen
Ho c'houez mad hen kouezet,
Eur c'hezik great he fortun,
Doan he dud hed ar zizan,

Mez an oll, c'hoarz ar vro,
Eo den iaouank a zilez
Hent an enor, ar furnez,
Da vrud fall a ro tro.

Servicha gant aket
Ho Mestr euz an Envou,
Dougen peb seurt respet
D'ho tadou, d'ho mammou,
Klask an tu d'en em glevet
Gant ho preudeur, c'hoarezed...
D'an oll diskuez dousder,
Diouall oc'h peb falloni,
Dreist oll oc'h peb lousdoni,
Hounnez eo hoc'h affer.

Caret or bize gouscoude guëlet aneza oc'h en em espern eun tam muioc'h evid non pas diverra eur vuhez quer prissiu. Mes nann, an Tad quez, pouzet dre ar c'hoant braz en deuz da brocuri gloar Doue ha selvidiguez an eneou, en em laz net, ec'his ma vez mall gantha aehui he vuhez evid nijal quentoc'h d'ar baradoz. Tad quer, e-pelec'h em'oc'h brema o c'houezi, o poanya da ziframma an eneou euz a dre grabanou an ærouant ? Ne ancounac'hait quet ac'hanomp ; evidomp-ni birviquen n'oc'h ancounac'haimp. Tad quer, pedit evidomp ; evidomp-ni, daoust ma eo dister hor pedennou, a bed evidoc'h, a bed ispicial an Autrou Doue da rei deoc'h nerz ha courach betec ar fin, da rei deoc'h eur vuhez hir ac eur yec'hed parfet, mar deo he vadelez, evid ma c'hallfot lacaat da zistroi oc'h Doue eun niver brassoc'h a vreudeur all deomp.

Graçou Doue ha comzou an Tadou ne gouzont quet varaomp en aner : beb eun neubeud ec'h antree ac e cresque ar sclerijen en hor sperejou ; hor c'honstiansou en em zizamme muioc'h mui euz ho fec'hejou dre ar confession ac a scanvee bepred ; hor c'halonou a dommee ac a deneree hemdez. Deiz an absolven (me a gomz euz ar zizungenta) ne voa quet c'hoaz deuet, ha ne ranquet mui lavaret deomp calz a dra evid tenna dour euz hon daoulagad.

Deiz an absolven a zeu. O deiz evuruz ! Pegue-ment a goustiansou a voe neuze dizaimmet euz ho oll fec'hejou dre an absolven santel ! E pegue-ment a eneou e voe la-queet, d'an deiz-se don ar peoc'h, ar joa, an esperans, collet gantho pell-a-voa ! O deiz evurusoc'h c'hoas euz ar goamunion ! Pegue-ment a galonou pur, pureet, neteet dre an absolven, a recevaz, d'an deiz-se, ho Zalver ac ho Doue gan an oll dispozisionou dleet, gan santimanchou a levenez ac a gontantamant, gan feiz, esperans ha carantez, gan quenz ha glac'har euz ho oll fec'hejou tremen- net ha gan eur guir volonteiz da zivoall mad dioutho en amzer dazont ! Pell e voampet euz Doue calz ac'hanomp ; setu ni tostet outha, deuet davetha, ac hen davedomp. Deuet eo dajom en hor c'hreiz, e goueled hor c'halonou ; plijet gantha ne zaffe mui quit diganeomp.

Eul LABOURER a Zant-Thegonnec.

(Al loden-all eur vech-all).

II.

Guerc'h eta ma virot
Dre ar bed hoc'h enor,
Huel-oc'h-huel ma savot
E peb deiz ho tenzor,
Bezit tud a zantelez,
Bevit kann ec'hiz Elez....
Doujit beteg ar skeud
Euz ar pec'hejou mezuz.
D'an dud a zo ken noazuz,
Ho c'holl tear, ho laz reud.

Kasait an nosveziou
A c'hoazed ha merc'hed ;
Dioc'h an nezeresiou
Grit ho kont da dec'hed....
En ein hevelep skoliou,
A ro ker fall kentelliou,
E teufac'h da zeski
Mil dra sot, mil voal arvez,
Ho kasfe koant eun dervez
D'an ifern da leski.

Kasait ar c'hoariou
Da zul var an divez,
Hag ar choloriou
Euz al leuriou nevez ;
Na dostait oc'h an dansou,
A dro d'ar red ar pennou....
Sul muioc'h e tanser,
Hag e ve dre friantiz,
E tonk an dishonestiz,
Sul kentoc'h e kouezer.

Kanfarted, traou tezet,
Ker groz en ho c'homzou,
Strinkellou, traou c'houezet,
Ker bale'h en ho sellou,
Trimpal a rit ha bragal,
Karnachad, lammed, fringal...
It, it, tud keiz, tud dall...
Hep dalc'h gant ar maro
Stlapet en eun tan garo,
C'houi raio eun dans all !

Kasait, oh ! kasait c'hoaz
An daremprederez
Etre daou, plac'h ha goaz,
Hag an diskolperez...
Na c'houzanvit na pokou,
Na dorn en ho kodellou...
Evel an tan, ar groug
Argarzit ar c'homzou brein,
A freuz voasoc'h eget drein,
A ra kement a zroug.

Gant goaz, plac'h voal vrudet
E nep tu na gerzit ;
Da galz ma veac'h pedet
Nep ti fall na hentit...
Mar her c'havit eun dra denn,
Mar rankit ober ho penn,
Klevit eul lavar koz :
Kared ma rear an danger,
Er danger en em goller,
Pe en deiz, pe en nos.

Kement ha ma hellot
Tec'hit dioc'h ar c'heriou ;
Evit n'en em gollot
Tec'hit dioc'h ar foariou...
E kear gant ar c'hafeou,
Er foar gant ar banneou,
En eun taol deut hardiz,
E kemerer goal voasiou,
Ec'h heuiller peb seurt gisiou,
E rear mil dra iski.

III.

Allaz ! evit an den
Epelec'h n'euz danger !
Ar pardonion zoken,
Bet guechall, pell amzer
Goueliou kaer, goueliou santel,
Deut brema ken dishevel,
Deut mez eur vro gristen
Gant ho strollad pec'hejou,
Evit kalz iaouankizou
A zo eur guir vosen !

Rodal, en em c'houeza,
Ha goueled kant marvaill...
C'hoarzin, en em freuza,
Ha lipad ar voutaill...
Klask kraon, per, hag avalou,
Ha traou all er c'hodellou...
Dansal goalc'h ar galon...
Eo stank-stank en hon amzer
Kement, siouaz ! a iouler
En eur vond d'ar pardon.

Aotrou hor Mestr, hon Tad,
Piou biken nemedoc'h
A gonto piz ha mad
An oll droug a ouzoc'h,
A zao gant ar bloaveziou
Oc'h heul ar seurt pardonion ?
Nag a reusiou kuzet !
Nag a voal abadennoù,
A garnach, a emgannou,
A bet an den kollet !

IV.

O tadou, o mammou,
Petra eo a c'hedit ?
Mar hoc'h euz kalonou,
Petra eo ma tavit ?
Perak leskel da vale
En ho roll ho pugale ?
Ma na stourmit outho
Dioc'h ma hellit hen ober,
Evel ma'z eo ho tever,
En em zaonit gantho !

O tadou, o mammou,
Bezit ta, me ho ped,
Selaouit va c'homzou,
An dud stard a zo red...
Dalc'hit var ho pugale,
Ha grit eun dezo bale...
Mam a re lez he merc'h,
A vezo mam reuzeidik...
Tad a re lez he vabik,
A vouelo var he lerc'h.

N'euz tra gam dre ar bed,
Mar c'hoantear he euna,
Hag a dreuz hag a hed
Na ranker he ganna...
Houarn a zreser er c'hovel,
Koad gant bouc'hal, gant kizel...
Mah, merc'h gant guialen...
Mad bugel eo touch dezan,
He zroug espern anezan,
Damanti d'he groc'hen.

Euruz ar vam, an tad,
Hep chom keit da zale,
A hench hag a dro mad,
A zef ho bugale !
Paotred, merc'hed a furnez,
D'ho zud a zo oll danvez...
Er bed ho sklerijen,
Ho flijadur, ho enor,
Guell evit n'her lavaror...
En Env ho c'hurunen.

V.

Evit ma reot brema
Ho mad gant va c'homzou,
Klevit c'hoaz an dra ma solo
O c'houi iaouankizou, a bet n'a
Ha c'hoant hoc'h euz da vired
Dinam ho korf, ho spered...
Sentit ta, ha sentit...
Chommit pell, gouezit tec'hed
Dioc'h peb danger a bec'hed,
Kerkent ha m'her guelit.

Taolit euz ho spered
Trium ar voal zonzezon,
Poanit evit mired...
Na dai en ho kalon,
D'ar zerpant, hen c'hoaz bian,
Torrit he benn, ha duan...
Allaz ! mar bez lezet,
E savo en eur predig...
Da zerpant ar zerpantik,
Ha gantho oc'h lazet !

Ac'hanoc'h na hellit
Beza treac'h d'an danger...
Oc'h Doue goulenit
Ma vezo ho Salver...
Evel Suzanna guechall,
Heskinet gant daou zen fall,
Lavarit, ha gant feiz :
Doue am guel, am barno...
Mar pec'han, n'am esperno...
Hane gouezot nep deiz.

Mar kendalc'h ha mar pad
Ar brezel en dro deoc'h,
Hoc'h unan harpit mad
Ken na zeuo ar peoc'h...
Hag ho pe d'en em vired
Oc'h ar c'hik, an droug-spered,
Oc'h eur bed e konnar,
Beillit, pedit ha stourmit,
Ha netra, ma na skuizit,
Na hello ho tiskar.

Dioc'h lavar, gourc'hemen
Eun tad den a evez,
A bedot d'ho kelen,
E poent it da govez ;
Hag hoc'h ene kempennet
Digemerit gant respet
E goueled ho kalon
Jezuz, penn an oll vadou,
Jezuz, mestr an oll grasou,
Hag ho kuella mignon.

Karit, karit Mari,
Mam an oll gristenien ;
Ah ! gouezit enori
Skor an oll bec'herien...
Pedit-hi e peb amzer,
Galvit-hi e peb danger,
Er boan m'en em gavot...
Var ar Verc'hez mar kontit,
Ha dioc'h he skouer mar bevit,
Biken n'en em gollot.

Na ancounac'hait ket
Komz ar Spered-Santel ;
Deoc'h ive vezo net...
Eun deiz pe zeiz marvel...
Soujit c'houek en eur vered...
E vezet bouet ar preved...
Marteze evit dalc'h...
Hag en hent an honestiz...
Daoust da Jan ho iaouankiz...
Brao c'houi ouezo bale.

LAOUK AN DERO.

FEIZ HA BREIZ,

KELOU A BEP BRO, HA KENTELIOU VAR BEP TRA,

DIGASSET BEP SUL

Da guement Christen a goms ar brezouec.

Eun Abonnamant d'ar Gazeten a goust :

- Evit eur bloas..... DAOU SCOUET.
- Evit c'huec'h miz..... EUR SCOUET.
- Evit tri miz..... C'HUEC'H REAL.
- Eur gazeten ebken..... DAOU VENNEC.

Ar bacamant a dle beza great araog caout ar gazeten.

ALIOU.

Ar scrijou a ve c'hoant da lacat er gazeten a dleer da adressi oll d'an Aotrou MORVAN, Beleg e Kemper.

Ar pacamanchou a dleer da adressi d'an Aotrou SALAUN ebken. An abonnamant a guemerer e ti an Aotrou SALAUN, librer, ru Kereon, e Kemper.

KEMPER, 10 Eost 1867.

N'eus ket pell, eur scrifagner o scrifa euz a Rom da Bariz, a lavare: « Doue a ro avechou d'an diaoul ar garg da ober Catekiz, hag eur mestr eo d'he ober. » An diaoul eur mestr da ober Catekiz ? A leverot-hu. Ia, hen ober a ra avechou, hag en amzer-ma mui evit-bis-coas.

Piou a zonje, brema ez eus pemp bloas varnugent, er Pap, tad an oll gristenien fidel, ar penn visibl-ze euz an ilis ? Piou a zonje da renta honor dezhan, da unani he bedennou gant he re evit difen an ilis santel ? Den couls lavaret. Pep cristen, evit guir, en doa desket er c'hatekiz ez eo ar Pap ar penn euz an iliz, ez eo Vikel Jesus-Christ var an douar, ez omp oll he vugale dre ma zomp christenien. Mes kementse a veze ancounac'heat buhan, ha deut euz ar c'hatekis den nemeur ne zonje er Pap.

Hoguen an ancounac'h-ze ne dlie ket padout, ha Doue ne felle ket dezhan e padje. Ha petra rai ? Cas ebstel da zeski d'ar gristenien ho deveriou e kenver ar Pap ? Nan, an droug-speret eo en deus carguet a guementse, ha satan en deus great an dra-ze guelloc'h evit n'o divije gallet hen ober an oll brezeguerien euz an ilis. En em laket eo da c'hoeza e dioucouarn an dud difeiz, da c'hoeza en ho c'halon counnar bag arrach a enep an Tad Santel ar Pap, a enep eador Sant Per. Kerkent int en em lakeat a zevri da glase distruja ilis Jesus-Christ, da harzal evel chas counnaret a enep an hini so en he fenn.

N'o deuz espernet na ionadennou, na goal bedennou, na gueier, na leou-douet. Sonjal a rea dezho ez eant da zispenn dioc'htu ar Pap evel eur preiz coezet etre ho skillou. Mes o clevet ar safar a reant, ar gristenien so divorfilet, ha pa o deus gueleit ho zad, Vikel Jesus-Christ, pa o deus gueleit ho mam, an Ilis Santel var var da veza lonket pe da viana goal laket, ez int diredet d'ho zicour. Daou c'hant milion a gristenien catolig so savet a vanden evit difen ho zad. Oll o deus savet ho mouez evit

diskuez her c'harient, hag o devoa mez ha keuz da veza he ancounac'heet. Oll int en em laket gant prez da ziskuez dezhan e voant he vugale, da rei dezhan mercou ar re gaera euz ho c'harantez. Ahaoue ar stratuil-ze ez eus comzet muioc'h euz hon Tad Santel ar Pap, hag ar gristenien o deus desket guelloc'h he anaout evit n'o doa great en ho buez oll bate-neuze. Ahaoue o deus anavezet pebez ham a stag an gristenien oc'h ho c'henta pastor. Desket o deuz ez eo e guir pebez an iliz eur c'hort a behini ar Pap eo ar penn ha pep christen eur ezel. Ha sur oun n'o doa morse ar gristenien anavezet ker couls ar poent-ma euz hon religion. Evelse ive gant pebez calon e cassont sicour d'ho zad ! Gant pebez levonez ne da ket an Eskibien da gaout an Tad Santel evit rei dezhan da anaout santimanchou he oll vugale skignet dre ar bed !

Ha pa zonje eo satan en deus great kementse eo red anzae e c'hoar ober catekis pa vez great dezhan ober ! Guir eo e sonje dezhan edo o vont da ziscar eador Sant Per ; guir eo an dud difeiz pouezet gantha a gred ive e labourent evit an ifern ; hoguen en dro-ma goucoude o deus labouret evit Doue hag evit he ilis. Doue so en em zervichet anezho evit lacat renta d'he iliz ha d'ar Pap muioc'h a honor evit n'oa bet rentet dezho ahaoue pell amzer.

Ha ne ket epken ar gristenien catolig epken a zo deut dre eno da drei oc'h ar Pap, mes zoken eals protestanted euz ar re zesket a hag a huela reng o deus digoret ho daoulagad d'ar vionez, dreist oll e Brozaoz hag e Prus. Bete ma zeus gueleit protestanted o cas ive ho ofrans d'ar Pap evit diner Sant Per, ha ma zeo nec het ha stratuillet oll lod euz ar vionez protestant o velet kement all. (*Revue de la Presse.*)

Ar gouelioù so bet e Rom o deus laket meur a hini da zonjal a zevri en ho zilvidigvez. Meur a hini euz ar re so o veza en errol o deus digoret pe commanset digueri ho daoulagad d'ar vionez. Eur ministr protes-

anezho, hag a voue lazet gant arzarantet. Na c'hrosmolit ket evel ma reas darn anezho, hag a voue scoet gant ael ar maro.

Hoguen an traou-ze oll a zigoueze gantho a ioa skeudennou euz ar pez a dlie c'hoarvout ganeompni. Scrifet int evit bor c'beten-ni, ni pere a vef er penn diveza euz an amzerion. An nep eta a zouch dezhan beza stard en he za, laket evez neket coeza a rafe.

Ra vezo aez ho tentationou da drec'hi ; hoguen Doue a zalc'h mad d'he c'her ha n'ho lezo ket da veza tentet en tu all d'ho ners ; ho lacat a rai zoken da denna frouez euz an dentation evit ma c'hellot delc'her mad bepret.

Kenta Lizer Sant Paul da gristenien Corinth. X. 6. G. M.

KELEIER.

An Impalaerez Eujeni, goude beza bet e Brozaoz, a so deut da Vrest ar pemp varnugent a vis gouere. Al lestr var behini edo a dlie mont kuit an nos varlere'h. Mes ar goal amzer en deus miret outhan, hag antronoz, d'ar c'huec'h varnugent, an Impalaerez a ioa c'hoas var rad Brest.

Etouez ar Vistri hag ar Vestretet scol o deus bet medalennou pe a zo great meneg enoruz anezho, e cavomp an hanoiou-ma evit departamant Finister :

An Aotrou Paul, mestr scol en Hanvec, en deus bet eur vedalen.

An Aotrou Cabon, mestr scol e Plourin, ha Guirriec, mestr scol e Guineventer, a so great meneg enoruz anezho.

An Itron Cloastr, mestrez scol e Kerber, (Sant Per Quilbignon) e deus bet eur vedalen.

An demezel Allaire-Damee, mestrez scol e Conkerne, so great meneg enoruz anezhi.

Lavaret a rer ez euz hano da rei, en oll hentehou houarn, billejou guelloc'h mare'had dont ha mont evit Pariz, da behini, gant ma verco an dervez ma zai ; hag ec'h ello distrei an deis ma caro, gant na jomo ket ouспен pemzec dez.

Kementse a vezo aessoc'h cals, p'eo guir e vezo gallet mont pa garer ha distrei pa garer. G. M.

PRIZ AN EID.

KEMPER. — 27 Gouere.		PONT-NABAT. — 25 Gouere.	
Priz ar c'hant lur.		Priz ar c'hant lur.	
Guinis....	16 lur, 44 c.	Guinis....	16 lur, 35 c.
Segal....	43 lur, 30 c.	Segal....	42 lur, 60 c.
Eiz.....	40 lur, 67 c.	Eiz.....	40 lur, 50 c.
Ed-du....	9 lur, 05 c.	Ed-du....	9 lur, 58 c.
Kerc'h....	40 lur, 86 c.	Kerc'h....	40 lur, 66 c.
Avalou-douar	4 lur, 25 c.	Avalou-douar	3 lur, 75 c.

Ar Gerant: AR. DE KERANGAL.

Kemper, moulet gant AR. DE KERANGAL, Moulter au Escopli.

Dioc'h a velit, Laouik An Dero, va mignon, ne goll ket he amzer, hag a c'hoanta ober vad oc'hpenn da eur rum dud. En deiz all, evel a ouzoc'h, en d'oa roet eun nebeut kentelioù fur d'ar baotred a gar re ho banne, d'ar merc'hed a gar eur veach an amzer ehoim da loja er meaz, ker karget e vez gantho ho c'har, ha ken tom e vez d'ho c'hlopen ; re a zanjer a ve evit an hevelep merc'hed o vond da gousked e guleou kloz pa vez kement a fo en ho fennou, ha dre-ze, skiant evel m'ho d'euz, ho c'hont da nebeuta, e kavont guelloc'h gourvez en ear braz var an henchou. Oh ! nan, kit, ne ket spered eo a vank d'hor merc'hed ! Diouallit, goazed, pe e vezot guerzet gantho.

Hirio va c'hamarad a ra eun tam skol da eun darn dud all, a vez peurvuia, evel a lavar, frank ar skanvadurez ha berr an deskadurez en ho fennou, d'ar iaouankizou a vez stank, re stank traou brell, traou dievez, hag a ra meur a veach evel eun darn loned lard, leun a dan, laosk ma vez ar c'habest var ho moue, a red, a red, a lam, a fring kement, ker brao, ma kollont ho alan, ma torront ho divesker.... en hevelep doare ne dalont mui netra.... nemet d'ar c'hivijer. Nag a dud iaouank en hon amzer, goazed ha merc'hed, merc'hed ha goazed, a forz da c'haloupad, da vragal, da drimpal, skerch ma vez ho fenn ha re hucl ho daoulagad, a gouez ive e toullou.... e toullou divalo, a dorr muioc'h eget ho divesker, a bak kement a lastez n'heller mui ho c'hempenn, ho goale hi na gant dour, na gant lichou. Traou tezet, traou brein abred, ar iaouankizou-ze a laosk kement a flear, ma vez eun donjer hag eun danjer en em gaoud var ho hent : n'euz nemet brini, pe dud hevel oc'h brini, hag a ve ho fljadur henti an hevelep kanfarted. An dud iaouank a c'hoantai selaou komzou va mignon, hag ober dioc'h a lavar, a ziskouezo eur guir furnez, hag a hello ren ho iaouankiz hep ober na droug dezo ho unan, na mez d'ho zadou, d'ho mammou, d'ho c'herent.

LAN AN DALL.

Hano ar Zent evit ar Sizun-ma.

- DILLUN, 5 Eost. — An Itron-Varia an ere'h.
- DIMEURS, 6. — Transfiguration hor Zalver J. C.
- DIMERC'HER, 7. — Sant Cajetan.
- DIZIQU, 8. — Sant Cyriac hag he gompagnunez, merzerien.
- DIRGUENER, 9. — Sant Germen a Auxer, Escop.
- DISSADORN, 10. — Sant Laurans, merzer.
- DISSUL, 11. — Navet Sul goude Pantecost.

An abostol hirio :

Va breudeur, na heuilomp ket ar goal ioulou euz hor c'halon evel ma reas pobl Doue guechall. Na azeulit ket an idolou, evel ma reas lod anezho hag a so scrifet divar ho fenn : Ar bopl a azezas da zibri ha da efa, hag a zavaz goudeze da ebatal. Na goezomp ket er pec'het mezuz, evel ma coezas lod anezho, hag a voue abalamour da ze scoet tri mil varnugent anezho gant ar maro en eun dervez. Na dentomp ket Jesus-Christ evel ma reas lod

tant euz ar re a c'halver *methodist*, so en em dennet en eur gouent a urs Sant Beneat evit studia da vad catekiz ar gatolket.

Diou blac'h iaquanc iuzeo so bet badezet gant ar c'hardigal vikel a Rom; unan anezho, so guionidig a Rom hag e deus trivac'h vloaz. Eben ne deus nemet trizeg vloaz hag a zo ganet en Aljeri. Antronoz ho badiziant int bet couzoumnet. Ar plac'h trivac'h vloaz a c'houlen a greis calon beza leanez.

An eskeb so bet e Rom a veze diguement, e tiez an noblans vrassa, e paleziou ar brinset, hag e vezent sonezet o velet en ho zouez, pe oc'h ho diguemeret, oc'h azeza oc'h ar memes taol gantho soudardet simpl. Hoguen ho zouez a iea kuit pa glevent e voa ar zoudardet ze ar vugale euz an ti, bugale ar brinset en em lakeat e reng ar soudardet evit servicha ha difen hon Tad Santel ar Pap. En derveziou-ze ive tri euz an dud iaquanc-ze a lignez hucel so en em dennet d'ar gouent, hag eun den iaquang a Vrozaoz, ive a noblans vras, so en em lakeat en urs Sant Dominic.

O comz euz a dud vad ez eus plijadur, hag evelse ez an da lavaret c'hoaz eur guer bennag.

Eun den divar ar meaz a zigouezas gantha n'eus ket pell, eur zulvez, eun den coz euz ar barrez, hag a c'houlennaz outhan an aluzen. Ar paour-ze en devoa daou vloaz ha pevar ugent. An tieg a voue sonezet oc'h he glevet, rag bete neuze ne voa ket bet gulet, oc'h asten he zorn. « Allaz ! eme ar paour coz, bete vrema em eus gallet caout va bouet o tioual al loenet er menezioù ; mes hirio oun re gabac'h, ne ellan ket mont d'ho heul, hag eo red din elasc ya zam bara a zor da zor. » Evit da zul da viana, eme an tieg, n'o pezo ket izom da glase ; deut d'am zi bep sul, hag o pezo ho pouet. Ar skuer vad-ze a voue heuillet gant tud ar barrez, hag ar paour coz en devoe ep dale, evit pep dervez euz ar sizun, tiez eleac'h ma veze diguemeret, maguet ha lojet evel pa vije euz a dud an ti.

An hini en dens scrifet kement-ma a jom estlamet o velet tud ker mad-ze oc'h ar paour. Caout a ra dezhan e tle an dra-ze beza rouez bras. Ma vije bet o chom e Breiz-Izel ne vije ket bet ker sonezet-se. A drugare Done, en hor bro ez eus aleiz a beorien ha ne vezont ket nec'het evit gouzout peleac'h caout ho fred hag eur c'hornig tro da dremen an noz. Hoguen mar deo stang en hon touez ar re a ro evelse diguemer mad d'ar paour, ho mirit ne ket bianoc'h ; ha n'em bije ket merket kement-ma panefe m'am eus c'hoant da ziskuez penauz eleac'h ma zeus nebeut a relijion e vezer sonezet pa veler unan bennag truezuz oc'h ar beorien. Evit beza mad d'ar paour, evit he garet ha caout respet evithan, eo red da guenta caret Doue. Ne ouzon ket ha ne deo ket bianet hirio etouez ar vretoned, ar garantez-ze evit ar beorien, mes ar pez a ouzoun mad eo, brema ez euz eur blavez bennag, ez oa aleiz a dieguenziou ha ne vije ket cavet æz enho ma ne vije ket, da vare ar pred, eur paour bennag da guemeret he lod ; ma ne vije ket bemnoz, pe cazi bemnoz, eur paour bennag da loja.

Goude beza lavaret kementise, deomp adarre d'hon tiec carantezuz. Eur vech all e figouezas gantha var an hent, e mare ser-noz, eur baleant, eun den hag en doa doare eul laer. — Roi din eur guennec bennag, eme an tremenjal. — Eur guennec bennag, eme an tiec ? Var an hent eyelen, ha d'ar mare-ma ?

Ne voue ket pell na vouezaz e voa ar c'hlasker-ze eun den o tont euz ar galeou, hag en devoa aoun o rei da anaout piou e voa, rag gouzout a rea ervad, pa vije gouezet a belec'h e teue, den ne roje dezhan diguemer na bara da c'hounit.

— Hag e sonch mad e maoc'h-hu, eme an tieg, da labourat ha da veva e den honest ma ve roet labour deoc'h ?

— E sonch vad avoalc'h, eme an tremenjal, mes den n'am c'hemero.

— Me ho kemero, eme an tieg, da c'hortos ma cavot guelloc'h.

An tieg a gassaz eta ar c'hlasker-ze gantha d'he di. Hema a labouraz eno eur pennad eb beza blamet gant den, hag evel m'en doa descadurez, e cavaz ep dale fret var an hentchou houarn eleac'h m'ema hirio en he az, ha m'en deuz eun atant vad da c'hounit he vouet.

An ober-mad-ze euz an tieg n'en deus ket izom a veuleudi.

Bez'ez euz er bed eur guer, hag er guer-ze ez euz eun hospital eleac'h ma receiver an oll. Kement hini a ia di a zo diguemeret. Ne c'houlenner oc'h den a be vro eo, a be relijion, a be lignez, a be vicher. Pe hen a so iuzeo, ture, christen, catolic, protestant ; mar deo clan, mar en denz eur boan bennag, e vezo diguemeret. Ne ket red zoken e ve goal glan, avoalc'h eo ne ve ket æz evit ma vezo digoret an or dezhan. Eun den a zant eur boanig bennag, a ia di, hag a gas ar c'hlenvet divar he dro araog ma zeo croguet mad enha. N'euz izom da glase anterour ebet evit mont di. An doriou so digor ato, ha pep hini a ell mont pa gar, ha d'ar mare ma car. Eur medecin so eno dalc'h mad evit caout soursi anezhan, hag evit lacat rei lojeis dezhan.

Ha ne deo ket hennez eo skuer an hospitaliou ? Hag e peleac'h ema ar guer so eun hevelep hospital enhi ? Ar guer-ze n'ema ket e Brozaos pehini gouscoude a ve c'hoant avechou da rei deomp evit skuer e pep tra, hag e peleac'h ez oar truezussoc'h oc'h ar chas evit oc'h an dud clan. N'ema ket zoken e Frans, petra bennag ma zeuz enhi hospitaliou aleiz, ha ma zoar enhi douguet avoalc'h da zicour ar re so er boan. Ar guer-ze eo Rom, eleac'h ma ren hon Tad Santel ar Pap, da lavaret eo eleac'h ma ren ar relijion catolic. Ar pez a ziskuez ne deus nemet ar guir relijion, ar relijion catolic hag a alfe lacat an dud evelse da ober ar vad, ha d'hen ober evit Doue epken.

TOULOUZ. — E Toulouz n'eus ken hano, n'euz ken prez nemet da bourchas pep tra evit ar zolanite a dle beza eno en honor da zantez Germana Cousin nevez canonizet. An oll a zo paravia o clasc gouzout piou a rento

muia honor d'ar zantez ha d'he relegou. Ar gouel-ze a vezo unan euz ar re gaera a oufet comz anezho.

CONSTANTINA. — Lavaret a rer en denz hon Tad Santel ar Pap otreet d'an Autrou Lascases, hailvet nevez zo escop a Constantina, kemeret an hano a escop a Constantina hag a Hippon, evit dere'hel sonch a zant Augustin a so bet escop eno. Hippon, hanvet hirio Bon, so en escopti Constantina.

Setu ama eur pennad scrif tennet a unan a gazetennou dispac herien an Itali. Comz a ra euz ar pez zo tremenet e Rom er sizunveziou-ma. Pidi a ran al lenner da zalc'her sonch eo comziou eun den difeiz a vercan ama.

Ar Pap, emezhan, en deuz adarre en dro-ma comzet oc'h ar bed catolic gant ar vouez solanel hag egleo-ze a gaver a bep amzer e lez Rom. Evidomp da veza enebourien da Bii Nao, ec'h anzavomp eo burzudus pe guer stard e talc'h d'he lezen. An den coz-ze, cabac'h dija, a so ferm en he feiz, ferm e penn eur relijion a so gouliet, mes ne ket maro ; an den-ze a gaf comzou ere evit assuri d'ar bed oll eo galluduz ar vuez e goazied ar relijion catolic, hag evit diskuez e tisprij hag e ra goap euz a vatouillerez he enebourien. Ar Pap a lavar guir ; ne domp nemet tud diot ha batouillerien. Bouzara a reomp an oll o sclanant an enep ar iliz, oc'h ober mennoziou diskiant evit he disoar, ha m'en deus nag ar gourach nag an ners da ober ar brezel dezhi a zevri, n'a da veva e peoc'h ganthi. Ne domp netra e kichen an den coz-ze. Pidi a ra, ha mont eun gant he hent coz, ha ni a vale evel tud vezo, oc'h erella var hon treid, oc'h eilgosteza a ziou hagna gleiz. Euz a Rom e sao moueziou ere, dizaoun, comzou a zao an den hag a ra honor dezhan ; euz a veziou misterieuz ar relijion catolic e sao c'hoaz eur zon dudiuz hag a laca an ene da zridal ; euz a dabernaclou an Itali unanet, pe o clasc en em unani, ne zao ket eur griaden, eur zouch hag a ve din euz ar vuez nevez a dliemp da gaout abavaromp-hen, rag ar virionez a ra vad d'an oll ; Rom a zesc deomp caret, cridi, brezelecat ha trec'hi. Deski a ellomp c'hoaz calc ganthi, mar emaomp e guirionez e sonch da vrezelecat outhi. Anez e vezimp trec'het sur, ep manc, ep douet ebet.

Red eo e ve skedus sclerijen an iliz santel, pa laca he enebourien da gomz evelse. G. M.

BUEZ SANT VISANT FERRIER.

(EIL PENNAD.)

He garantez evid ar beorien a ioa dreist muzul ; rei a rea d'ez-ho kement a helle da ziourat, hag he dad hag he vam e leac'h caout fall kement-ze, a lakea ho slijadur o velet ho mab o rei beteg an tam euz he c'hinou evit terri naon an dud ezommec. Eur dra cousgoude hag ho lekeaz da zont da veza sonezet braz, oa gulet Visant, en eur ober pevar dervez, o rei d'ar beorien an holl vadou a gompetaz gant-han pa voue great ar rann e ti he dad.

He dad a guinnigaz neuze d'ez-han tri zra ; da guenta mont, mar carje da rilijuz en urs Sant Dominic, ervez ma seblante beza galvet gant Doue, d'an eil monter bad dre eun dimiz hucel, ha d'an drede, mont da Paris pe da Rom da hebrober he studi. An den iaquanc vertuzuz a lavarez heuze d'he dad, en doa peil a ioa dizezet p'ha d'urrou ar bed, hag e kemere ar guenta euz an tri zra a guinniguet d'ez-han, da lavaret eo, antreal en urs Sant Dominic, visant a ioa bajet neuze a drivac'h vloaz. He guerent a voue carguet a levonez o velet kement-ze, ha Visant a n'em lekeaz o coudet Sant Dominic e Valans, d'ar sul, peup a viz c'hluveur er bloaz 1374.

O veza eat er gouent-ze, Visant a n'em lekeaz a zevri da anaout piz buez Sant Dominic, fondatour euz he ners, ha goude beza he anavezet mad, en em laca da ober ar pez a rea en he amzer ar zant braz-ze. Evit beza gouest eun deiz da rei d'ar bobl eun descadurez christen, eun descadurez hag a gas d'an env, Visant a n'em bo diat studi euz an theologi hag euz ar Scrutu Santel. Dre ma c'houlie mad, eo al lizeghez brassa enebour a gav an den var an douar, e teu da dremen he holl amzer pe o studia, pe o scriva, pe o len pe o pedi. Petra bennag ma colle nebeutoc'h a amzer evid ar re hall, an dra ze n'hen lekeaz ket da veza nebeutoc'h gae ; mez dre ma c'eske he vertuzioù, e c'eske ive an divaez seder a vije ato scrivet var he dall. He skiant lem hag he zescadurez vraz o veza bet anavezet, he voue lakel da rejant ar filozof, hag hen ober a reaz epad tri bloaz, gant kement a c'houlieghez, ma vije sebezet an holl rilijuzed euz he gouent, ker coulz hag an dek-ha-trigouent den iaquanc a deue bemdez euz kear da guemer he guentellion. Prest goude e reaz, euz he zorn he unan, eul levr hanvet *doare da zesk ar filozof*.

He vistri, evit rei tro da eur spered ken lemm, da gaout eun descadurez c'hoaz vrassoc'h hen e bassad da Varcelon, e leac'h m'a-z-oa rejanted theologi budet meurbed dre ho discamand. Ar rejanted-ze a ioa ive euz a urs Sant Dominic. Eun nebeud goude e kesiot anez-han da Lerida, keric vian a Catalogn, e leac'h m'a-z-oa er mare-ze tud desket braz oc'h ober scool. En em rei a reaz eno a zevri da studi an theologi, ha d'an oad a piz vloaz varn ugent, e voue great doctor gant ar c'hardigal Per Luna, bet da c'houde pap-iaoz dindan an hano Veneat XIII. Cousgoude Visant Ferrer a voue galvet gant he escop, da zont da Valans, evit rejant an theologi. Ar sant a zougaz ar gark-ze gant kement a c'houlieghez, ma zeaz ar brud anez-han dre an holl broioù, ha ma l'ezou menaz evit diskelta den a ioa neuze en Aragon. Cousgoude ne dremene ket he holl amzer o rejant an theologi, os prezec a rea ive aliez, hag ar bobl en eur zont euz he sermon a lavare bepred, ne ouijet ket clevet eur gouel loc'h prezeguer. Evel-se Per Luna, oc'h anaout has he zescadurez hag he santelez, a lavarez d'ez-han der c'haout evit kenbechour pa rancaz dont euz a Spagn e Frans, evit beza sclerijennet gant-han var eur guervr, ar vraz en devoa da ober e bro C'hall. Ar c'hardigal goude beza great ar guerridi-ze, a reaz kement a ioa en he

challoud evit lacat Visant da chom en Avignon; mez, mag he gomzou caer, nag he offrou mad ne heljont dont abenn d'hen dele' hel eno, hag e tistroaz adare da Valens evit tamen he amzer etre rejanti an theologi ha prezec an aviel.

Misant euspen m'az-oa eur rejant a briz huel hag eur sermoner dreist, en doa e hoaz eur c'hem caer ha laouen. An drouc-spered, poaniet o velet santelez ar servicher-braz-man da Zoue, a reaz kement ma helle evid en distrei euz an hent mad, ha dreist pep tra e clascaz hen lacat da goueza ar souge anez-han e-unan pe er vanite, o tiskuez d'ezhan peguen brao den ez-oa. Epad pell amzer, e sclabezaz he spered dre sonjesonou ar re loussa, o clask hen lacat dre n'hen-ze da goueza en drouc. Mez ar sonj euz ar barados, a reaz ato d'ar Sant beza treac'h da enebour he silvidiguez. He zevosion d'ar Verc'hez Vari, a bede aliez e creiz an danjerion a zigasse d'ez-han an drouc-spered, kercoulz hag ar pinijennou a rea, hen c'hendalc haz bepred en hent mad. Er guiz-ze, he spered taguet aliez dre sonjesonou ar re vezussa, e leac'h dont da veza selabezet, ne rea nemed caerat dirag Doue, rag ma tale he ato prenet mad dor he galon pa dené Satan da c'houlén digor. An douar a n'em glevaz gaud an ilern, evid ober da Visant coll ar peza a die Doue rei d'aneb a guendalc ho en ho c'halon ar berlezen gaer a virginite. Eur c'hrek a lignez hiel, tan an ilern en he c'halon, ha devet he c'hoif gaud al librisite, o veza great an neuz da veza clank da zont d'he c'hoavez ar zant-man. P'edo erru ar beleg e kichen ar gouele, ha laket an dud da vont er meaz, ar plac'h fall-man a c'hoanteaz lacat Visant da bec'hi gant-hi. Eur vech-all e voue kuzet eur plac'h fall-all e cambri Visant. Hooman pa zistroaz an den santel d'ar gear, var an abardae, a reaz d'ez-han ar memez kinuig mezuz. Evid ar zant, leun a fisians e Doue a voue ato treac'h d'an drouc-spered en-holl danjerion-ze, ha zoken a deuz abenn da zistrei euz Doue aneb a die beza evit-han eur penn-caoz a varo eternal.

BODEUR.

(Eur pennad-all eur vech-all.)

MISSION SANT-THEGONNEC.

(EIL PENNAD.)

Autrou mad!

Petra a lavarinn-me deoc'h c'hoaz euz hor Mission? Mil ha mil dra em heffe da lavaret deoc'h. Mes, ec'hiz ne don quet evit parlant euz anezo oll, mercomp epquen an traou brassa pe da vian an traou guelapla, ha laqueomp anezo ec'hiz ma teint e teint.

Da guenta, Doue a roaz deomp eun amzer ar vvara evid ober hor Mission. Eun devezie glao epquen or boe var bemzec.

Hor Mission a yec mad. An dud a voa contant; an tadou ac an autronez beleyen all ne ziscouezent quet queneubend beza drouc contant euz hor bolontez vad.

Er guenta sizun e voa 20 belec diavaz, o conta an

daou da ac eb conta hor beleyen-ni, ha ne quet labour a vanket dezo oll. Hor beleyen-ni soquen o devoa ho lod da ober. En cil zizun edo 21 belec a ziavez, ar me mez re, nemed daou, evel er zizun guenta; ha labour avoale n'e cavent adarre.

Lavaret deoc'h brema an oll burzudou a c'hrac en deuz greet Doue en hon touez, epad an devezyou-ze a zilvidiguez, an oll vad en deuz greet deomp ar Mission santel or beuz bet, quemense a zo en tu all d'am galloud. C'hoant em heffe epquen, mar gouffen ober mad an dra, da ziscouez deoc'h, da lacat da bara dirac ho taoulagad eunan dreist-oll euz a frouez ar Mission, me fell d'in lavaret an dihun euz ar seiz en hon touez. An tad a lavare deomp, en eur zigori ar Mission.

« Eur Mission, emeza, a zo eur c'hrac caer evid eur barrez, eunan euz ar brassa graou a dille an Autrou Doue, en he drugarez, da rei da eur barrez. Eur Mission pa laqueer ar poan da brofita euz aneza, a zo zoug ten eur barrez frouez burzuduz a zilvidiguez. Guelita on eur mission pegument a bec'heryen na velc'h usquet o tistroi oc'h Doue! Pegument a goustiansou, sammet a bell-ze a bec'hejou grevuz, d'zacrifachou ar vez dizamet ha laoueneet. Pegument a sperejou, leun a devajien, a zoucton, a serupulou, a vez selemjennet, ac eonet! Pegument a galonou simpl, crevel! Pegument a dud yaouanc, pere a rede d'an c'holl euz ho ene ac euz ho honor, hazet ha sachet adarre var an hent mad, var an hent euz ar furnez ac euz an devotion! Pegument a guizyou fall disc'hrizyennet ac a braticou santel, fontet, a voall scoueryou lammet aca scoueryou mad roet! Pegument a dieguezyou e pere e rene, gant an dizurz, an dizurvaniez, ar venien, ar gassoni, ar brezal, digasset dre ar Mission da veza tieguezou mad, renquet, leun a zonzans Doue, tieguezyou e pere e ren brema an unvaniez, ar peoc'h, ar garantez cristen! Pegument a enebouryen laqueet da veza mignoned, a guerent yenet laqueet adarre d'en em garet! Pegument a bibezeou arretet, a injustissou raparet! Nac a varzudou all a gaffen da henvel deoc'h!... Mes eunan euz a gerra frouez ar Mission, eo an dillit euz ar seiz er barrez, e calonou an dud euz ar barrez. »

« Ar feiz, o pebez donezon gaer roet deomp gant Doue, laqueet gantha ennomp da guenta da zeiz hor badizyant! Mes siyodz ni a lez aliez ar feiz-se da gousquet en hor c'halon, da neubenta da voredi, en amzer ordinal, ac avechon soquen da vervel. Ha pa vez cousquet ar feiz en hor c'halon, petra a c'hoarvez? N'or beuz mui na squiant na penn ne velomp mui an traou ec'hiz ma e maint e guiryonez, ac e reo ep follentezyou. Cavont a reomp braz ar peza a zo bian, ha bian ar peza a zo braz, ac elec'h clasq hor mad, e clasqueomp ac e reomp hon drouc hon-unan, en em daulomp var hor penn er malheur. »

« Ia, eun den, pa vez cousquet ar feiz en he galon, ne vel mui an traou ec'hiz ma tleer ho goelet. Evelse, ar madou, an henoryou ac ar plijadurezou euz ar bed-ma, pere a zo traou dister oll, traou neant ac aliez dan-

jeruz, ober a ra cals stad euz anezo, ho c'harat ac ho c'hasq a ra, poanya a ra d'ho acqizita ac e sonj euyout enho ne evurusted. Pebez follentez! Ar madou spirituel er c'hontrol, ar beden, an oficoz da zul ha da vonel, ar zacramanchou, ar gloar ac an evurusted eternal euz ar baradoz ha traou all evelse, pere a zo oll braz, talvouduz, prissioz meurbed, ne ra nemeur a stad euz anezo, ma ho c'hasq nemeur, ne zonz quet enho soquen. Pebez follentez!... Ac an niver braz a bec'hejou a ra, a ra hnen ar, eouls lavaret eb serupul ebet, dre an abec ma mang a feiz. »

« Mes hiant ar feiz e calon an den-ze, ha querquent pebez echenchumant enha! An traou a zo braz e guiryonez, a zeu da veza braz evitha, ac an traou a zo bian, a rjom bian, gouzout a ra lacat pep tra en he renq. Evelse, guelet a na nenze ez eo Doue an Autrou ac ar madou Soudoren, pehini epquen a dleer da zervicha gant maquet eo Doue hon Tad, hor Madoberour, hor guella nac hor fidele Mignon, pehini epquen a dleomp da garet o arripuzion c'halon, euz a oll nerz hor spered ac euz a challoz hon ene, ez eo Doue epquen e cavimp ar peoc'h hon levenez ac hon evurusted. »

« An traou euz ar bed-ma, lacat a ra anezo en ho renq, ober a ra euz anezo ar stad a dleer da ober euz a draou brema ha dister ven em zervicha a ra euz anezo evel en eur dremeh, drvez enzul an abostol. »

« Setu aze petra a zen an den da veza, pa vez dihunet ar feiz en he galon: guelet a ra an traou ec'hiz ma tleer ho guelet, ec'hiz ma e maint e guiryonez, ac en em rena a ra, en he oll oberon, dre ar sclerijen a zeu deza euz he feiz. Querzet a ra con evelse gant an hent mad, gant an hent a gass d'ar guir vuhez, d'ar baradoz. »

« Ia, setu aze petra a zeu an den da veza, pa vez dihunet ar feiz en he galon... »

An tad a gomzaz evelse.

« Ha ma! Setu ar peza a zo c'hoarvezet e Sant-Thegonnec. Hebe a ra quet gant eun den, mes gant eur barrez a bez! O! guelit-hi brema, peguer echenchet ez ep! Pebez guel-lac'h enha! Sant-Thegonnee ne voa quet eur barrez fall, nac eur barrez eb, devotion, mes ar feiz edo eun tam coumpet e calon meur ha hini. Ha! pebez feiz beo bre-ma e calonou an oll! Guelit quantoc'h an oberou ha barnit dionz an oberou-ze. Pebez pedennou mad brema dre an oll dieguezou! Pebez agnet d'an oficoz! Pebez heuz ac horrol euz ar pec'hed marvel! Pebez furnez en oll yaouanquiz!... Mes, na beanlen quet, mar fallse d'in henvel an oll vad on deuz greet ar Mission binnet en hon touez! O! plijet gant Doue e quendalc'he brema va farez quer da vont bepred evelse, ha Sant-Thegonnee a e hallse neuze servichout da scouer d'an oll barreyou all tro-var-dro d'ez! »

Setu ama c'hoaz frouezennou mad all euz hor Mission. Diez e caffen, Autrou quer, ma ne roffen quet deoc'h anaoudeguez euz anezo.

Da guenta, an tad en deuz prezegnet deomp var an Tad Santel ar Pab. Meur a c'herie martreze a zo bet

lavaret en hon touez, arauc ar Mission, pa zene euz euz ar Pab, ha ne vizen quet atao deread avoale d'ho Madan Tad en deuz desquet deomp anout ar Pab, hag anout hor c'halonou d'hen caret, ha brema or beuz deoc'h Viquel Jezuz-Crist eur respet ar brassa ac eun gant heuz an tenera. Eur gues a zo bet greet evitha en holl touez, d'an diou zalornvez euz ar Mission, gant an Autrou Person ac he guenta Cure, epad oferen ar gommunion. Ar guenta quest a zavaz 527 flour, ac an 503 flour, ar peza a ra d'an 011 032 flour. Quemense aziscouez n'or beuz quet a gassoni euz hon Tad Santel ha meubod caret, pehin a zo duze e Rom, bepred gourthrouzou ha persecutet gant bugale vian Robespier ha disquidyon Volter.

An tad en deuz prezegnet deomp c'hoaz var an devotion da Zant Joseph, pried Mari, ha pebez goueza Sant-Thegonnee da vont en he Vreurie. Lavaret a ve heffer ez int oll et ebarz.

An tad en deuz ive prezegnet deomp var Broudiez ar Feiz, breuriez gaer, breuriez ac a ra quement a vad en Iliz Santel Catholic, ha querquent quement o deuz eur guennec henac da zivoeret, o deuz goullennet mont er Vreurie. Eur vanden vrad a voa dea en he Sant-Thegonnee, mes an niver anezo a zo brema mui egued doublet.

« Clui a ve! Autrou quer, on deuz hor Mission douguet frouez mad en hon touez, na on deuz Doue ac ar Verc'hez, na veza meuler. Ha n'em beuz quet lavaret deoc'h an oll! Mes e dleomp ive avazo, penauz ma en deuz ar Mission labouret quer mad, var hor c'halonou, e voamp bet prenet mad. Hon autronez beleyen, gant hor person mad en ho fenn, o devoa hor prenet mad evid ar Mission. Var deo eur bloaz a voa e parlant deomp, beb sul, cals pe neubend euz hor Mission da zont. Ni euz he c'hoarvez, fidele da heurva euz an mad hor beleyen, an em zispoze guella ma c'hellemp da reço graou Doue. Bemdez, e peb ti euz ar barrez, e lavaret, eur bloaz a voa, er pedennou commun, eur Rater ac eun Ave Maria evit pidi an Autrou Doue ac ar Verc'hez Santel da seilla ho graou ac ho bennozyou var hor Mission da zont. Doue ac ar Verc'hez binnet o deuz clevet hor pedennou. Meulet ra vezint da viquen gant peb guinou ha caret gant an oll galonou! Amen. »

Enl LABOURER a Zant-Thegonnee.

D'AN AOTROU KERMARKE.

Aotrou mad ha Kermarker, evelse d'oc'h ni Lennet em eus e Feiz ha Breiz al lizer oc'h edis discrivet d'an aotrou Kersale, divar henn P' ha T. Dont a ran gant prez d'ho trugarecat da veza diventet gant kement a vouissiegeuz, dion baourez keas lizek'he pere, evel C ha Q, a foa gourdfrouzet da veza l'halet er meaz eus ar vro evel diou zivroadez, pe drouc est'raijouez deut da chom en hon touez heb guir ebet. Anez'c'hui,

Aotrou ker, edo great ho zro, rac hor mignon Yan, den mad gouscoude, a iea dezho a zevri. Aoualc'h oa, a re zoken, beza lakeat er meaz C ha Q; perac en em guemeret oud ar P hac an T?

Anzavomp, Aotrou ker, ne c'hellimp biken dont a-benn da gaout oll ar memes doare da skriva ar bre-zounek. Guehall goz evel hirio, peb unan a skriva evel m'a cave guella evit beza entente pe gomprenet. N'eus fors, kendalc'homp da garet hor bre-zounek ha da garet ar re n'ho deus ket ar memes doare da skriva evel domp.

Diguemerit, Aotrou mad; an tammik lizer-ma evel eun desteni eus va doujans hac eus va c'harantez evidoc'h.

PERROT.

LEVR AL LABOURER.

Labour ar wenenen meaz hag evel evel ti.

E-touez ann holl loened, ar gwenan ho-unan Eñ em glev, vit maga ho bugale vihan. Hevelep ti ho deuz, hevelep lezennou.

Vel breudeur e vevont eun hevelep broiou. 1495

Ind labour heb arzao enn deizioù euz ann hanv Gant aou na ziouerint enn amzer euz ar goanv.

Peb unan anezho e deuz he deveriou: 1500

Darn vit destum bevanz, a gonez war ar parkou; 1500

Darn e gweled ann ti, kent sevel ann dinen 1500

A led eur golo-pek, cavet war eur wezen, 1500

Ha gant glud distennet ann eil oc'h eghile, 1500

A vasson hag a stag ann dirennou, neve, 1500

Darn a neta ar mel, hel laka da ziver, 1505

Enn dirennou cleuzet evid hen dighemer, 1505

Lod a vir toul ann or, hag a sell hep arzao, 1510

Mar be merkou enn ear euz a avel ha glao, 1510

Lod a ghemer ho samm gand ho c'henseurtezed; 1510

Lod, evel eun arme, a bella ar gwesped: 1510

Ann holl a labour stard, hag ar mel ann doussa 1510

Tro-war-dro d'ar c'hestou a skign ar blaz c'hueka. 1510

Peb unan deuz he c'harg. — D'ar re goz ar source 1515

Da ober ann diren, ha da ghempenn an ti. 1515

Ar re iaouank avad, skuiz euz ho holl zroiou, 1515

Gand eur samm oc'h pep garr ne zeuont d'ar c'hestou 1515

Nemet p'arru ann noz. — Ind a furch e pep tu 1520

War ar brak, war al lann, war bleun ar gwiniz-du, 1520

War ann thin, ann hallek, war deliou ann derven, 1520

War ann tilh, ar sivi, war bleun ar gwistinen. 1520

D'ann holl hevel labour, d'ann holl hevel repoz. 1520

Mintin mad e savont, e knitont; ha da noz, 1520

Kentre ma kuz ann heol, lezont ar bokedou, 1520

Hag e nijont d'ar ghear da ziskuz ho memprou. 1520

Kent ma sav ann eil hed, ar rak eunn deiz pe daou, 1525

N'hoc'h euz e-tal ann or nemet plega ho penn, 1525

C'houi a glevo neuze eunn dispac'h er ruskenn. 1525

Enn noz kent ma tinez ar vestrez euz an ti. Evesait antrohoz rac war-dro kreiz an de, C'hoant ho pe, ma d'eo caer, eunn hed-gwenan neve.

Keid ha ma talc'h ar gouabr ar glao dreist ho lennou, 1530

Ne d-int ket gwelet stank o vont war ar mesiou; 1530

Na kent ma sav avel dioc'h ann ti o pellaat, 1530

Bete ma na welont ann amzer o clouaraat. 1530

Aliez ind nem lastr, evel bagou dister, 1540

Gant greun-trez vit treuzi ann ouabr euz ann amzer. 1540

Le Delaig' SJ. M. S. A. E.

Ar Paeron hag ar Fillor.

Bez'ez oa n'oa mar ebet eun derveziour hanyet Iouen ker paour, ker paour, ma n'en doa ket a vara da rei d'he vugale. Seis buguel en doa, hag an eisvet a voa en hent.

Penaus sevel an eisvet-ze pa ne alle ket beva ar seiz all hag ho mam? Va den a ioa eta nec'het, ha mantri a rea he galon bemdez o clevet he vugaligou o c'houlen bouet, ha n'en doa ket da rei-dezho, oc'h ho c'hlevet o vobela ha ne alle ket sec'ha ho daelou. Setu hen eun dervez gant he anken hag o vont en hent. Ne votie ket pelec'h ez ea, hag e valeaz epad eun dervez ep eanar. Da noz eñ em gavaz e kichen eur vengleus toullet doud dindan an douar, hag er vengleus-ze ez oa eur vanden laeron o chom.

Cabiten al laeron a zeuz etrezeg enha, hag a c'houlen naz outha petra glasse.

Ionen a scrabaz he benn, rag gwelet a rea oa digouezet fall; a zigoraz he c'hinou, mes ne deue comz ebet er meaz.

— Eat eo da deod gant ar c'haz? eme al laer; pe stag eo ous da staon? Gorto, ma velin.

Iouen a gavas neuze ar gomz, hag en em daolas d'an daoulin. Aotrou, emezhan, me zo eur paour kez. n'em eus great morse droug da zen. Tec'het oun euz ar guær rag ranna a rea va c'halon o clevet va bugale o c'houlen bara ouzha ha n'em eus ket da rei dezho; ha neuze ne felle ket din chom var dro va greg a ia da vouilloudi, ha n'em eus ket eun druillen da lacat en dro d'ar buguel pa vezo ganet.

Cabiten al laeron en devoue truez oc'h an den kez. Digas a reas dezhan peadra da zibri, ha neuze e roas dezhan eur ialc'had arc'hant hag eur marc'h d'he zouguen d'ar guær. « Kea d'as ti, emezhan, ha pa vezo gouilloudet da c'hreg, deus da lavaret din, rag me fell beza paeron d'ar buguel.

Iouen a iez ac'hano, e c'hellit cridi, fongue enha. Biscoas marc'heg var he benn-kezeg n'oa bet sounnoc'h he benn gantha na laouenoc'h he zrem evit na voa Iouen o c'haloupat d'ar guær.

Pa zigouezaz, oa cresket an dud en he lochen. Rei a reaz ar ialc'had arc'hant d'he c'hreg, hag ez eas dioc'htu en dro da gaout cabiten al laeron. Hema a deuas da zelc'her ar buguel; hoguen en noz e falvezas dezhan e vije great ar vadiziant; ha neuze e roaz eur ialc'had aour da Iouen evit ar fillor.

Pa zigouezaz, oa cresket an dud en he lochen. Rei a reaz ar ialc'had arc'hant d'he c'hreg, hag ez eas dioc'htu en dro da gaout cabiten al laeron. Hema a deuas da zelc'her ar buguel; hoguen en noz e falvezas dezhan e vije great ar vadiziant; ha neuze e roaz eur ialc'had aour da Iouen evit ar fillor.

Pa zigouezaz, oa cresket an dud en he lochen. Rei a reaz ar ialc'had arc'hant d'he c'hreg, hag ez eas dioc'htu en dro da gaout cabiten al laeron. Hema a deuas da zelc'her ar buguel; hoguen en noz e falvezas dezhan e vije great ar vadiziant; ha neuze e roaz eur ialc'had aour da Iouen evit ar fillor.

Pa zigouezaz, oa cresket an dud en he lochen. Rei a reaz ar ialc'had arc'hant d'he c'hreg, hag ez eas dioc'htu en dro da gaout cabiten al laeron. Hema a deuas da zelc'her ar buguel; hoguen en noz e falvezas dezhan e vije great ar vadiziant; ha neuze e roaz eur ialc'had aour da Iouen evit ar fillor.

Pa zigouezaz, oa cresket an dud en he lochen. Rei a reaz ar ialc'had arc'hant d'he c'hreg, hag ez eas dioc'htu en dro da gaout cabiten al laeron. Hema a deuas da zelc'her ar buguel; hoguen en noz e falvezas dezhan e vije great ar vadiziant; ha neuze e roaz eur ialc'had aour da Iouen evit ar fillor.

Pa zigouezaz, oa cresket an dud en he lochen. Rei a reaz ar ialc'had arc'hant d'he c'hreg, hag ez eas dioc'htu en dro da gaout cabiten al laeron. Hema a deuas da zelc'her ar buguel; hoguen en noz e falvezas dezhan e vije great ar vadiziant; ha neuze e roaz eur ialc'had aour da Iouen evit ar fillor.

Pa zigouezaz, oa cresket an dud en he lochen. Rei a reaz ar ialc'had arc'hant d'he c'hreg, hag ez eas dioc'htu en dro da gaout cabiten al laeron. Hema a deuas da zelc'her ar buguel; hoguen en noz e falvezas dezhan e vije great ar vadiziant; ha neuze e roaz eur ialc'had aour da Iouen evit ar fillor.

Pa zigouezaz, oa cresket an dud en he lochen. Rei a reaz ar ialc'had arc'hant d'he c'hreg, hag ez eas dioc'htu en dro da gaout cabiten al laeron. Hema a deuas da zelc'her ar buguel; hoguen en noz e falvezas dezhan e vije great ar vadiziant; ha neuze e roaz eur ialc'had aour da Iouen evit ar fillor.

Hoguen ar buguel ne jomas ket pell beo. Mervel a reaz ha setu hen o vont d'an Env, Sant Per a ioa a iol an or hag a lavaraz dezhan dont ebars. — Ne din ket, eme ar buguel, nemet va faeron a deufe ive ganhen.

— Piou eo da Baeron, eme Sant Per?

— Ear c'habiten laeron, eme ar fillor.

— Mad, eme Sant Per, va buguel, te so divlam, hag hag a ell dont ama; da baeron avad a jomo er meaz.

Setu ar Verc'hez o tremen ebou, hag o c'houlen oc'h ar buguel:

— Perag ne des ket tre er barados?

— C'hoant am eus, eme ar buguel, e teufe va faeron ganhen!

— Eme Sant Per, hag he baeron so eul laer bras; pe-nauz he receo etouez an dud dinam?

Neuze ar buguel a iez d'an daoulin, a groazaz he zaouarnigou hag a vouelas kement ma e devoue ar Verc'hez truez outhap. (Ar Verc'hez eo ato ar vam a drugarez). Mont a reaz ac'hano hag e tistroaz eun nebeudig goude, eur c'hobeled aour ganthi en he dorn.

Dal, ya map, emezhi, kea da gaout da baeron; lavar dezhan c'haer c'hobeled-ze a zaelou a vir glac'har, ha pa en devoz he c'harguet, e c'hello dont ganez d'ar baradoz. Kemer an dionaskel arc'hant-ma, ha kea, nij.

Al laer braz a ioa cousket var eur roc'h, he fuzil en eun dorn hag eur gontellasen en dorn all. Pa zihunaz e velas dirazhan, azezet var eur vodén lavan, eur buguel coant meurbet, ha gantha dionaskel arc'hant hag a luguerne en heol, hag eur c'hobeled aour en he zornig. En em lacat a reas da frota he zaoulagad, hag e sonje dezan eo eun ure en devoa. Mes ar buguel a lavaraz:

— Ne ket ureal eo a rit; me eo ho fillor a zo deut d'ho clase evit ho cas d'ar baradoz, evit m'o pezo ar memez euruset evel oc'h eus great dinme da gaout o lacat va badezi. Neuze e lavaraz d'he baeron kement a ioa c'hoarvezet gantha.

Calon ar pec'her a zigoras neuze d'ar c'hilac'har; he zaoulagad a deuas da veza dion feunteun a zaelou. Ar c'heus d'he bec'hejou a deuas da veza kel lem, ma sanc'claz en he ene evel eur c'hleze, hag e varvas. Neuze ar buguel pehini en doa destumet daelou ar pec'her er c'hobeled aour, a nijas gant ar c'hobeled hag ene he baeron d'an Env eleac'h ma vouent lezet ho daou da vont; rag Doue ne fell ket dezhan coll ar pec'her, mes he zavetei, ha rei a ra ar pardon d'an nep her goulén; hoguen red eo her goulén gant eur guir glac'har, ha Doue ne bardon ket d'an den otus ne fell ket dezhan anzaio he bec'het.

(Tennet euz eur gazeten a Spagn). G. M.

Hano ar Zant evit ar Sizun-ma.

DILLUN, 12 Eost. — Santez Clara, Guerc'hez.

DIMERS, 13. — Euz a eisvet Sant Laurans.

DIMERC'HER, 14. — Euz a eisvet Sant Laurans. Iun.

DIZIQU, 15. — ASSOMPTION AR VERC'HEZ.

DIRGUENER, 16. — Sant Roch.

DISSABORN, 17. Eisevet Sant Laurans.
DISSUL, 18. — Deuet sul goude Pentecost, Sant Joacim, tad ar Verc'hez glorius Var.

An abostol hirio.
Euruz an den so bet cavet didach, ha n'en deus ket redet varlerc'h an aour, na laket he fizians en danvez nag en tenzoriou. Pion eo hennez, ma her menlimp, rag traou burzuduz en deus great en he vuez. An hini so prouvet en deus great kementse, a zo parlet, hag he c'hloar a vezo eternel; an hini a c'helle terrial lezen ha n'en deuz ket he zorret, ober an droug ha n'en deus ket great. Evelse he oberou mad a vezo stard dirag Doue, hag oll assamble ar zant a gomzo euz he aluzennou.

Levr ar furnez 31. G. M.

KELEIER.

Dissul tremenet on doa bet ar blijadur, e Kemper, da glevet an Aotrou'n Escop o couta deomp he veach Rom. Dissul diveza on eus bet adarre ar blijadur da glevet mouez eun Escop euz hor bro, an Aotrou Goesbriand, Escop Burlington, er Stadoù-Unanet, en Americ, ha marteze ep dale or Bezo c'hoaz ar blijadur da glevet mouez eun Escop all, eun Arc'hescop ive euz an escopti-ma, an Aotrou Testard du Cosker, Arc'hescop Haiti, rag bez'ema ive dre ama, o tistrer euz a Rom.

An Aotrou'n Escop Goesbriand en deus lavaret deomp ive eur guer euz ar peñ en doa gwelet er guer guenta euz ar bed. Eno e veler an Iliz, e tacher outhi gant ar bez. Gwelet a rer ez eo unan, unan epken, peo guir e veler eno an unvanter a galon hag a greden euz an oll gristenien, merket dre an Eskibien so en ho fenn, gwelet a rer ez eo catolig, da lavaret eo ez eo skignet dre ar bed oll, rag gwelet ez euz eno eskibien a guement corn so er bed. Abostolig eo, rag ne deus ket chenchet abaoue Sant-Per. Santel eo ive rag rei a ra ato sant, hag ar zantelez-ze a veler o para en hini so hirio en he fenn.

An Ilis santel, eme an Aotrou'n Escop Goesbriand, so leun a vuez, hag ar peñ en diskuez eo an doare ma en em skign dre ar bed. Ama en deus comzet deomp euz a sened Baltimor. Er vro-ze n'eus c'hoas nemet eun nebeut bloaveziou, ne voa nemet daou pe dri Escopti, ha brema ez eus seiz ha daou ugent, hag e saver dalc'h mad escoptiou nevez dre ma cresc niver ar gristenien catolig. Ar peñ a dremen eno a dremen ive er broiou all, evel ma zeo ar Chin, eleac'h ma teufe an oll da veza christenien pa nefe ma o deuz aoun. Ar peñ en deus roet tro d'an Aotrou'n Escop Goesbriand da gomz deomp euz eur missioner a Vreiz, euz a Benbenf e kichen Naonet, bet merzeriet er broiou-ze n'eus ket pell.

Goudeze en deus comzet deomp euz a Vreurie ar Feiz, ar c'henta euz an oberou-mad, an hini a rent hirio muia gloar da Zoue, hag a ziskuez ive guella ar vuez a zo en Iliz. Gouzout a ra pe guer mad eo an escopti-ma evit Breurie ar Feiz, peo guir eo ar seisvet etouez oll escoptiou ar bed. Gouscoude e c'halle marteze beza unan bennag ha ne anavez ket ar Vreurie-ze. Hoguen

Goudeze en deus comzet deomp euz a Vreurie ar Feiz, ar c'henta euz an oberou-mad, an hini a rent hirio muia gloar da Zoue, hag a ziskuez ive guella ar vuez a zo en Iliz. Gouzout a ra pe guer mad eo an escopti-ma evit Breurie ar Feiz, peo guir eo ar seisvet etouez oll escoptiou ar bed. Gouscoude e c'halle marteze beza unan bennag ha ne anavez ket ar Vreurie-ze. Hoguen

Goudeze en deus comzet deomp euz a Vreurie ar Feiz, ar c'henta euz an oberou-mad, an hini a rent hirio muia gloar da Zoue, hag a ziskuez ive guella ar vuez a zo en Iliz. Gouzout a ra pe guer mad eo an escopti-ma evit Breurie ar Feiz, peo guir eo ar seisvet etouez oll escoptiou ar bed. Gouscoude e c'halle marteze beza unan bennag ha ne anavez ket ar Vreurie-ze. Hoguen

Goudeze en deus comzet deomp euz a Vreurie ar Feiz, ar c'henta euz an oberou-mad, an hini a rent hirio muia gloar da Zoue, hag a ziskuez ive guella ar vuez a zo en Iliz. Gouzout a ra pe guer mad eo an escopti-ma evit Breurie ar Feiz, peo guir eo ar seisvet etouez oll escoptiou ar bed. Gouscoude e c'halle marteze beza unan bennag ha ne anavez ket ar Vreurie-ze. Hoguen

Goudeze en deus comzet deomp euz a Vreurie ar Feiz, ar c'henta euz an oberou-mad, an hini a rent hirio muia gloar da Zoue, hag a ziskuez ive guella ar vuez a zo en Iliz. Gouzout a ra pe guer mad eo an escopti-ma evit Breurie ar Feiz, peo guir eo ar seisvet etouez oll escoptiou ar bed. Gouscoude e c'halle marteze beza unan bennag ha ne anavez ket ar Vreurie-ze. Hoguen

Goudeze en deus comzet deomp euz a Vreurie ar Feiz, ar c'henta euz an oberou-mad, an hini a rent hirio muia gloar da Zoue, hag a ziskuez ive guella ar vuez a zo en Iliz. Gouzout a ra pe guer mad eo an escopti-ma evit Breurie ar Feiz, peo guir eo ar seisvet etouez oll escoptiou ar bed. Gouscoude e c'halle marteze beza unan bennag ha ne anavez ket ar Vreurie-ze. Hoguen

Goudeze en deus comzet deomp euz a Vreurie ar Feiz, ar c'henta euz an oberou-mad, an hini a rent hirio muia gloar da Zoue, hag a ziskuez ive guella ar vuez a zo en Iliz. Gouzout a ra pe guer mad eo an escopti-ma evit Breurie ar Feiz, peo guir eo ar seisvet etouez oll escoptiou ar bed. Gouscoude e c'halle marteze beza unan bennag ha ne anavez ket ar Vreurie-ze. Hoguen

Goudeze en deus comzet deomp euz a Vreurie ar Feiz, ar c'henta euz an oberou-mad, an hini a rent hirio muia gloar da Zoue, hag a ziskuez ive guella ar vuez a zo en Iliz. Gouzout a ra pe guer mad eo an escopti-ma evit Breurie ar Feiz, peo guir eo ar seisvet etouez oll escoptiou ar bed. Gouscoude e c'halle marteze beza unan bennag ha ne anavez ket ar Vreurie-ze. Hoguen

Goudeze en deus comzet deomp euz a Vreurie ar Feiz, ar c'henta euz an oberou-mad, an hini a rent hirio muia gloar da Zoue, hag a ziskuez ive guella ar vuez a zo en Iliz. Gouzout a ra pe guer mad eo an escopti-ma evit Breurie ar Feiz, peo guir eo ar seisvet etouez oll escoptiou ar bed. Gouscoude e c'halle marteze beza unan bennag ha ne anavez ket ar Vreurie-ze. Hoguen

Goudeze en deus comzet deomp euz a Vreurie ar Feiz, ar c'henta euz an oberou-mad, an hini a rent hirio muia gloar da Zoue, hag a ziskuez ive guella ar vuez a zo en Iliz. Gouzout a ra pe guer mad eo an escopti-ma evit Breurie ar Feiz, peo guir eo ar seisvet etouez oll escoptiou ar bed. Gouscoude e c'halle marteze beza unan bennag ha ne anavez ket ar Vreurie-ze. Hoguen

Goudeze en deus comzet deomp euz a Vreurie ar Feiz, ar c'henta euz an oberou-mad, an hini a rent hirio muia gloar da Zoue, hag a ziskuez ive guella ar vuez a zo en Iliz. Gouzout a ra pe guer mad eo an escopti-ma evit Breurie ar Feiz, peo guir eo ar seisvet etouez oll escoptiou ar bed. Gouscoude e c'halle marteze beza unan bennag ha ne anavez ket ar Vreurie-ze. Hoguen

den ne jomfe ep mont enhi, ma c'houlent peguement a vad a ra.

Lavaret en deus deomp goudeze eur guer divar benn he Escopti. N'en doa nemet pemp beleg d'he zicour pa zeas di da gomans. Bez'ez oa nebeut a gatoliked; hirio en deus pemp mil varnugent catolig elouez eun niver cals brassoc'h a protestanted, hag eun niver cals brassoc'h c'hoaz a dud ep relijion.

An Aotrou'n Escop a dle rei an urziou Dissul unneg a viz Eost.

Ar retred evit ar veleien a vezo er bloa-ma e Kemper 18 Eost, e Lesneven 1^a Guengolo.

An aotrou'n Escop Godell, vikel abostolig Pondichery, en Indez, so maro d'an oad a zaou vloaz ha triugent, e Chambery, o tistrei euz a Rom.

Ar gurun e deus great adarre droug er c'harter. Eun den euz a Sizun, o charreat evit eun tieg euz an Trehou, so bet lazec gant eun dalm gurun ep m'o defe bet droug nag he loenet nag he vestr pehini a ioa ive e kichen ar c'har. — En eur c'hanton a zepartamant ar Morbihan, eur bar armen, eur bar cazarc'h bras divent en deus drailet an ed hag an oll frouezion.

Setu ama, evit arrondissamant Kemper, ar re so douguet :

Evit ar C'honsel Jeneral.

Canton Brice: an Aotrou Gueguen hag an Aotrou Markis Ploec.

Canton Conkerne: an Aotrou Cont Chauveau hag an Aotrou Balestrie.

Canton Douarnenez: an Aotrou Dafretay' hag an Aotrou Durest:

Evit ar C'honsel a Arrondissamant.

Canton Kemper: an Aotrou Veisseyre, mear Kemper, hag an Aotrou Briot, mear Penhars.

Canton Conkerne: an Aotrou Guillou.

Canton Rosporden: an Aotrou Cotten.

Canton Pont'nAbat: an Aotrou Paysant.

Canton Fouesnant: an Aotrou Cont Lanascoul.

An ed a zalc'h da guerat e Frans hag er broiou estren. Er broiou all couls hag ama an amzer a zo dies evit ober an eost, pehini, evel a lavaremp er sizun dremenet, a zo falloec'h e meur a leac'h evit na zonjet. Ar c'herc'h, da viana er c'harter-ma, a zo fall braz e lec'hiennou. Ar guiniz ive a so scanv e carteriou so.

E Brozaoz, en Holland hag e Belgic ema atao ar c'hlenvet var ar chatal. Ne varf ket gouscoude kement a loenet evel a rea varlene.

Brema ez euz eur pennad e velet o vale chas raz, glaz, guer, a bep seur liou. Ar secret a ioa cavet da rei dezho al liou a garet en eur rei dezho da zibri eun doare bouet bennag hag en doa ar vertus-ze. Hoguen setu ama bre-

ma eur Saoz hag en deus cavet ar secret ive da lacat ar guez da guemeret al liou a ve c'hoant. Ober a ra eun doare louzou gant c'hoalen ha metal; lacat a ra al louzouze d'en em veski gant douren ar vezen, hag ar vezen, dre ma sao, a deu ar c'hoant anezhi da veza ruz, melen, marellet, ervez al louzou a vez bet roet dezhi.

Eur barz iaouang en doa savet eun nebeut guerzioa, hag o veza en em gavet gant eur mignon, en em lakeas d'ho lenn dezhan; mes ne lenne nemet pennad ama, pennad abont. Goudeze e c'houlennas digant he-wignon pere oa ar pennadou a blije dezhan;

— Ar pennadou n'oc'h eus ket lennet, eme eguile.

Eun hussier a c'houlenne en dez-all digant he vevel:

— Casset ec'h eus-te va billet d'an Aotrou X... ?

— Ia, Aotrou.

— Petra en deus lavaret dit ?

— Lavaret en deus din mont gantha da gaout an diaoul.

— Ha te, petra c'heus great ?

— E feiz Aotrou, me zo deut d'ho caout.

Var ribl eur ster ez oa en dervezio tremenet eun den hag a guemere he ebat o teleur he gui en dour. Ar c'hi a neue hag a deue da gaout he vestr; hag hema hen taole adarre dioc'htu en dour. Eat oa erfin ker scuiz ar c'hi keaz ma en doa beac'h o sevel euz ar ster. O velet-ze, eun den a voa o sellet a lavaras da vestr ar c'hi: Beuzi a reot ho ki ma ne eant ket: — Euz a betra en em emellit, eme eguile. Ma c'houlfen ervad e c'houlfac'h neun evel va c'hi hag eveldon va unan, e tolfen ac'hanoc'h ebarz ive!

— Ah! c'hui a voar neun, eme an den truezuz, mad, it da guerc'hat ho ki! ha kerkent her bountaz er ster, hag e tec'has kuit.

Eno ez oa cals tud o sellet hag o devoue plijadur o velet ar c'hi hag he berc'hen o clasc en em denna euz ar ster guella ma c'hellent ho daou; ha pa voant deut ho daou var ar seac'h, ar c'hi, a leverer, a ioa cals laouenoc'h evit he vestr. G. M.

PRIZ AN EP.

KEMPER. — 5 Eost.

Priz ar c'hant lur.

Guinis... 46 lur, 59 c.
Segal... 44 lur, 30 c.
Eiz... 40 lur, 67 c.
Ed-du... 9 lur, 05 c.
Kerc'h... 40 lur, 86 c.
Avalou-douar 5 lur, « c.

PONT'NABAT. — 4^e Eost.

Priz ar c'hant lur.

Guinis... 46 lur, 35 c.
Segal... 42 lur, 60 c.
Eiz... 40 lur, 50 c.
Ed-du... 9 lur, 58 c.
Kerc'h... 40 lur, « c.
Avalou-douar 4 lur, 63 c.

Ar Gerant: AR. DE KERANGAL.

Kemper, moulet gand AR. DE KERANGAL, Moulter an Escopti.

FEIZ HA BREIZ.

KELOU A BEP BRO, HA KENTELIOU VAR BEP TRA.

DIGASSET BEP SUL

Da guement Christen a goms ar brezounee.

Eun Abonnament d'ar Gazeten a goust:

Evit eur bloas... DAOU SCOUET.
Evit c'huec'h miz... EUR SCOUET.
Evit tri miz... C'HUEC'H REAL.
Eur gazeten ebken... DAOU VENNEC.

Ar bacemant a dle veza great araog caout ar gazeten.

ALIOU.

Ar scrijoui a ve c'hoant da lacat er gazeten a dleer da adressi oll d'an Aotrou MORVAN, Beleg e Kemper.

Ar paeamanchou a dleer da adressi d'an Aotrou SALAUN ebken. An abonamant a guemerer e ti an Aotrou SALAUN, librer, ru Kereon, e Kemper.

KEMPER, 17 Eost 1867.

An dud difeiz, an dispac'herien, ar re a ra brezel d'an Ilis santel, a gomz hag a scrif a enep hon Tad Santel ar Pap, a so lienvel, eme eur scrifagner, oc'h eur vanden chas red o redeg varlerc'h eur preiz. Mar en em gaf eur c'haro, eul tonarn, eur c'had da veza dizoloet gantho ha da redeg en ho raog, e chilpont, e redont paravia an eil d'eguile. Ne zonjont tam d'en em daga an eil eguile; ho oll nerz, ho oll gallout, ho oll gounnar a zo troet etrezeg ar preiz a glascant da baca; ha seulvui ma tostaont outhan, seulvui e cressk ar chilp, an tousmac'h hag ar jolori a reont. Hoguen mar tigouez dezho tizout ho freiz, neuze e troont ho c'hounnar an eil oc'h eguile; neuze gant ho dent, ho skillou, en em dagont, en em zraillont; pephini a fell dezhan caout ar preiz oll abez, bete ma tigouez ar chasseurien da lamet ar preiz digantho ha d'ho c'has en ho zro a daoliou fouet, a daoliou baz pe a daoliou boutou, ha ne jom gantho nemet redek adarre pa garint varlerc'h eur preiz all.

Evelse a c'hoare ive gant enebourien an Ilis Santel, gant enebourien ar relijion. Keit ha ma zeo hano da ober brezel d'ar relijion, en em glévont brao bras. Ne ket m'en em garfent an eil eguile; mes eur preiz a zo eno, hag an oll o deus c'hoant da lacat ho dent varnezhan evit he zrailla, he ziscar, he zistruja; chilpat a reont hag harzal bete coll ho halan; redeg a reont bete ma sao an eonen varnezho; mes Ilis Doue ne all ket beza discaret; dorn Doue a deu ato e guis pe c'his da lamet ar preiz a dre ho skillou, ha neuze e troont ho c'hounnar an eil oc'h eguile, hag en em dagont, hag en em gannont, hag en em zraillont goassoc'h evit chas. Kementse so bet guelet meur a vech; bevech ma zeus bet coezet eur preis bennag etre ho daouarn, goude beza distrujet ho freiz, pe pa velent ne allent ket he zistruja, en em zistrujent an eil rum eguile. An dud difeiz n'o deus goezet morse nemet discar, distruja; morse avad n'o deus gallet sevel netra eleac'h ar pez o deus discaret.

Doriou an isern ne vezint morse tread hida Ilis Jesus-Christ, ha setu perag he enebourien, evitho d'an em glevet oll da ober ar brezel dezhi, a zo gouscoude alles tabut etrezho. O velet ne ell nag ho scrijoui, nag ho c'homzou, nag ho gueier dontabenn anezhi, ez eont bep en amzer en egar hag e loscont ho malloziou an eil var eguile. Neuze eur vanden en em laca da zistruja ar pez a ra eur vanden all. Eur rum a ziskuez scler hag anat ne deus gant eur rum all nemet gueier; ar pez ne deo ket dies, p'eo guir n'ema ar virionez gant nicun anezho. Var ar memes follen baper zoken e cavor avechou eur pennad scrit great gant unan hag a zislavar eur pennad scrit all great gant eun all.

Ep mont larcoc'h, en dervezio tremenet unan a lavare voa Rom, an dud a Iliz, ar re a nemt ar relijion, ar penn abeg ma voa var an douar kement a dud dizesc, ep gouezieguez ebet, e voa Rom eo a lakea hag a zalc'he an denvalijen-ze var ar bed; ha var ar memes gazeten eun all a anzave penaus caera hag ijussa tra a voa da velet er miziou-ma e Pariz, e voa eur benveg great e Rom gant eur beleg, gant eun tad a gompagnonez Jesus. Setu penaus e teu avechou an eil gaout da zislavaret eguile.

Hoguen epad m'ema ar chas droug-ze oc'h arzal, Rom a gas ar guir sclerijen dre ar bed oll, hag ar sclerijen-ze en em skign hirio var ar c'harteriou eleac'h ma zeo bet teoa an denvalijen, eleac'h ma deus bet ar virionez muia poan o veza diguemeret. L'enebenet Eziri Breuriez ar Feiz a voa peguement o deus bet ar viszionerien da c'houzaon er C'honchingio, pe guer onislen e voa Tu-Duc, impalaer ar vro-ze; peguement a viszionerien hag a gristenien en deus laket d'an maro. Mad, hirio ez euz e Pariz er c'hannad abersan impalaer-ze, hag ar c'hannad-se so eun Escopmissioner, an Aotrou'n Escop Gauthier! Carguet eo da zele her leac'h an Impalaer Tu-Duc e Frans, ha da gas gantha d'ar vro-ze benviachou ijnuz evit al labour douar. Kementse a ziskuez, ep mar, ema calonou ar rouanel etre daouarn

Doue-hag-ho-zro-en-tu-ma-plich-gantha. Diskuez a ra ive peguement e c'hounit sclerijen an aviel e broiou Sao-heol.

En Rom ez eus bet, ar 16 a vis gouere, eun assamble Cardinalet hag Eskibien evit barn vertuziou an tad Lois-Mari Grignon Monfort, evit divezatoc'h he ziscleria euruz ha goudeze he ganoniza. An tad Monfort so euz a Vreiz. Hen eo en deus savet pe fontet urs ar veleien missionerien a gompagnunez Mari, pe missionerien ar Speret-Santel, ha Breuniez ar merc'hed a furnez pere so ker skignet dre ar vro-ma.

Etouez ar Cardinalet a vezo great, douetus da vis guengolo, e leverer e vezo kemeret unan etouez Eskibien Frans, hag a jomo e Rom evel ma chome ar C'hardinal Villecourt. Cridi a rer soken e vezo roet dezhan ar garg a zifennour ar Frans. Guechall pep bro catolic a felle dezho caout eur C'hardinal difennour e Rom.

Toulouz. — Netra caeroc'h evit ar goueliou solanizet e Toulouz en honor da zantez Germana Cousin. Tud kear couls hag an dud divar ar meaz a voa diredet oll da guemeret perz en tri devez gouel-ze. Ne allet ket finval en Ilizou ker stard e voa an dud enho. Paour ha pinvidie, oll e felle dezho rei eur merc bennag a garantez d'ar zantez nevez. Da noz ne velet nemet tan; lavaret e vije e voa ker hag ar c'harter oll tro-var-dro e tan. Er ruiou ne allet ket bale; var zoug e voat casset. Gouscoude n'eus bet na dizurs na darvoud ebet, nag er procession nag e mare all, ar pez a eller da guemeret evit eur burzud dlet da bedennou Santez Germana.

Aljeri. — An Tad Santel ar Pap en deus hanvet an Aotrou'n Escop Lavigeri vikel abostolig euz al loden euz an Afric a so etre escopti Aljer hag ar Senegal. Ep mar, ar vikel abostolig a zavo eno eur mission evit cas sclerijen an aviel er broiou a so e creiz an Afric hag a so ken nebeut navezet.

Spagn. — Eskibien Spagn, ar re anezho so bet e Rom evit gouel Per, a so bet great eun diguemer ar c'haera dezho e Barcelon pa voant o tistrei euz ho beach. Escop Barcelon, ar re vraz euz a guær, hag eur bopl ep niver so eat e procession d'ho diguemeret var an aod pa ziskennent euz al lestr. Ac'hano int eat da Iliz an Itron-Varia a drugarez da drugarecat Doue.

Napl. — Ar c'hoezeg a vis gouere, e parrez Santez Lucia, e Napl, eur Zaoc, oajet a nao bloas varnuguent, a so antreet en Ilis catolic, o kuitaat an errol e pehini en doa bevet bete neuze. Recevet en deuz ar vadiziant, sacramant ar binijen, sacramant an aoter, hag ar gouzoumen, gant ar c'haera santimañchou a religion. An daelou a goeze bep en amzer euz he zaoulagad hag a deneree calonou an oll.

Eun imach d'ar Verc'hez savet e Plouzevet. — E parrez Plouzevet ez oa bet varlene eur mission prezeguet gant an Aotrou Lamark, person S. Corintin, e Kemper,

hag ar mission-ze en devoa douguet frouez ar guella. Egit miset an tad ar zouch euz ar mission-ze euz a speret tud he barrez, person Plouzevet en deus lakeat sevel eur skeuden pelec'h imach d'ar Verc'hez en eul leac'h a vebl'han. Oll evit oc'h he guelet, ma teui da zouch da bep him euz ar grasou en deus bet digant Doue epad ar mission. An skeuden-ze so bet benniguet e mis gouere diveza. Eur bobl ep niver a voa deut da guemeret perz er gouel ha da heuilla ar brocession. Hed eur c'hart leo e calguent an hent.

Ar skeuden so savet e tal an hent braz a ia euz a veg ar Raz da vec Penmarc'h. Eno, dirag ar mor bras, skeuden Mari savet huel, a c'houlou doujans ha carantez; ac'hano e ren var ar vro. Lavaret a rafet eur Rouanez o veilla var he sujidi pe eur vam oc'h evessaat oc'h he bugale. Var ar mean bras so dindan ar skeuden e lenner ar c'homzou-ma: *Posuerunt me custodem. Va laket o deus da c'hoardianez.*

An Aotrou Lamark, eat di evit ar solanite-ze, en deus prezeguet gant cals a nerz, euz a dal ar skeuden, var ar c'homzou-ze. Digasset en deus dezho da zouch euz an traou caera tremenet epad ar mission, hag euz ar santimañchou guella o doa bet; hag he gomzou a lea doue e calonou an oll.

Ia, emezhan, Mari so aze, e bord an hent, he daouarn savet etrezeg an env, hag he daoulagad troet var ar barrez. Bez'ema aze var bord an hent a gas da chapel an Dreindet a veler eur pennadig ac'hann. Ha ne deo ket e guirionez Mari eo a dle hor c'has d'an Dreindet Santel? Ha ne deo ket hi ar c'han dre behini e tisken beteg en-homp grasou an oll galloudec? Ah! euruz ar barrez so laket dindan goard Mari; euruz ar pastor so Mari o tioual he zenvel! Pastor ha denvet difennet gant Mari ne oufent ket mancout da guenderc'hel er mad.

Tennet euz ar gazetenn *l'Océan*. G. M.

HISTOR ZANTEL TENNET DIVAR LEVR ANN BROD.

(TRIOUEC'HYED PENNAD).

Mean Horeb. — Brezel ouc'h ann Amalecited.

Pobl-tud bugale Israël a guitaaz gouelec'h Sin, ha goude beza great meur a ehan, diouc'h ma c'houre-he menne ann Aotrou dre ar goulounen, e kampjont e Raphidim, e pelec'h ne oa ket a zour da eva.

Ar bobl en em ghemeraz adarre ouc'h Moizes, hag a lavaraz: Roit dour d'eomp evit ma evimp. Moizes a respontaz d'ezho: Perag en em ghemerit-hu ouz-in-me? Perag e temptit-hu ann Aotrou? Ar bobl, taghet-gand ar zec'hed, a groze maoc'h-vui enep Moizes, o lavarout: Perag hoc'h eus-hu great deomp dont er meaz euz ann Egipt, evit hol lakaat da vervel gant ar zec'hed, ni, hor bugale hag hor chatal.

Ha Moizez a griaz var-zu ann Aotrou, o lavarout:

Petra a rinn-me d'ar bobl-ma? Eun nebeut c'hoaz, hag e vezinn labezet gant-han.

Hag ann Aotrou a lavaraz da Voizes: Kerzit ar bobl, ha kemerit gan-ehoc'h eur re bennag euz henaoured Israël, (1) ha dalc'hit enn ho tourn ar voaler gant pehini hoc'h euz skoet var ster ann Egipt, hag it. Me c'hoaz zalc'ho eno diraz-hoc'h var mean Horeb; Skei a feot var ar mean, hag e teni dour anezhan, evit ma c'hoar bobl, Moizes a reaz evel-se dirag henaoured Israël. Hag ec'h hanvaz al leac'h-se temptation, dre'n abek da grozvol bugale Israël, ha dre ma ho doe temptet ann Aotrou, o lavarout: Ha beza ema ann Aotrou enn hor c'hreiz, pe n'ema ket?

Hoghen, Amalek a zeuaz da herzel Israël e Raphidim. Ha Moizes a lavaraz da Josue: Choazit brezelerien, hag it da vrezelkaat ouc'h Amalek. Var c'hoaz me vezo var lein ar grec'hen, ha goalen Doue gan-en em dourn.

Josue a reaz evel m'en doa lavaret Moizes, hag e stourmaz ouc'h Amalek. Hoghen Moizes, Aaron ha Hur a bignaz var lein ar grec'hen. Ha pa zave Moizes he zaouarn, Israël a c'houneze; mes pa izellea ann disterra tra, Amalek a drec'he. Hoghen, daouarn Moizes a zene da skuiza; kemer a rejont eta eur mean, hag hel lekejont dindan-han, hag ec'h azeaz var-n-ezhan. Hag Aaron hag Hur a skore he zaouarn euz ann daou du; hag evelse he zaouarn na skuizjont ket tre bete kuz-heol. Ha Josue a lekeaz Amalek e droud-atred, hen hag he bobl, ar c'hleze ep ho c'hein. (2)

Hag ann Aotrou Doue a lavaraz da Voizes: Skrivit ann dra-ma enn eul levr, evit ma vezo dalc'het koun anezhan, ha roit-hen da Josue da viret. Rak ober a rinn ne vezo mui meneg a Amalek dindan bolz ann Env.

Ha Moizes a zavaz eun aoter, hag a hanvaz ann aoterze: Ann Aotrou eo va gloar; rak, emez-han, dourn ann Aotrou a zavo divar he droun eneb Amalek, hag a rai d'ezhan brezel dre zaouarn Israël a rum da rum da viken.

(Sant Paol a vel e mean Horeb eur skeuden euz a Jezuz-Krist, guir vean burzuduz, skoet var ar groaz evit doura hon eneo. Anezhan e tiredaz dour ha goad, danvez ar zakramanchou; ar seiz feunteun-ze a c'hrasou, pere a vezo bepred oc'h heul he Iliz, evit terri sec'hed ann eneo santel a dostai out-ho e doare vad.)

Amalek hag e arme vraz o tont da drouc'ha hent d'ar bobl a Israël, a verk ann drouc-spered hag he holl dud fall, o klask ato herzel ann eneo mad, epad ma kerzont var-zu ann Env ho gur vro. Josue hag he vrezelerien choazet a verk hon Tad Santel ar Pap hag he veleien, karget ar re ghenta da vrezelkaat ouc'h enebourien hor zilvidighez. Moizes, he zaouarn astenet e doare eur groaz, a verk hor Zalver o pedi evid-omp dirag he Dad, o tiskouez d'ezhan he zaouarn gouliet evid-omp. Ma ehanfe da bedi, e vemp trec'het; mes evel na ehano ket, ec'h hellomp kounta var ar gounit, mar kendalc'homp

(1) Henaoured: *Ar re gosa, ann exac'h veur.*
(2) E droug-atred: *E gallek, en deroute.*

da vrezelkaat a zoare. Brezelkaat ha pedi, setu petra zo da ober. Hor Zalver en deuz hel lavaret he-unan: Beillit ha pedi, evit na gouezot ket e deiz ann aotrou.

BREZEL SANT VISANT FERRIER.

(TRIOUEC'HYED PENNAD).

Netra ne dlellaz dont abenn da lacat Visant Ferrer da derri gourhemmen Doue. Meuz setu petra reaz neuze an dud fall a ioa en dro d'ez-han. Klask a rejont d'ar brud-vad a ioa anezhan, en eur lacat calz traou var he han: Eun den euz en doa tremenet he vez e pelec'h skuiz o clevet ar rebechou a reaz dez-han. Tamallaz e-gaou var draou grevuz mannet, ha gouest d'hen lacat da goll he eno. Meuz Doue, bepred ma evid he servicherrien, a reaz ma voue dizoloet ar gaou, hag a lekeaz ar vez da goueza var a goulad he-unan. An dud a leze; o veza clevet ar pez a ioa ermet, a reaz clask an den euz, hag a lavaraz d'ez-han dre gær ansao he c'haou, pe e vije clevet er pizon, pe zoken laket d'ar maro. An sabo er vez heul he fag'hez, hag e lavaraz pen-da-ban, penaez e ba tremenet pep ia. Her c'has a rejont da gaout Visant, hag a zeuz ann neuze o velet anezhan goloet a vez ouc'h he fag'hez gant ilidoc'h a nerz eguet biscoaz da lacat he vad en ehe goulad, ha da rei da viana, da Zoue ar penad diveza euz eul vizez en doa tremenet er pech'ed.

C'houec'h vloaz a ioa abaoeg m'edo Visant teologal eatedral Valens. Ar vad a reaz dre an oll escopti dre he vertusioù, ar c'hentelioù hag ar skuer vad a noennadennaz varn ez-han calz poanioù euz aberz an drouc-spered hag euz aberz an dud fall. Meuz digollet e vije creiz he boanioù gand ar frealzighez, a deuz d'ez-han euz an Env ha dre an istim a reaz anez-han an dud vertuzuz. Kemeret e vije gand ar re-man evid eun den hag a ioa mignon da Zoue. An holl a denne kuzel d'han-han dre m'o devoa fisians vraz er sclerijen a deuz d'ez-han euz an Env. Eundez euz goude, ar c'hardinal Per Luna, o veza bet hanvet gand Clement VII, cannad ar Pab e palez Charles VI, roue a Frans, a zigouezaz d'ez-han tremen dre Valens, er bloaz 1390. O veza clevet ar pez a lavaret euz descadunez, ha santelez Visant, heb doug uech-all great doctor er gear a Lerida, e falvezaz d'ez-han he digas gan-han e Frans. Ober a reaz da Visant chom e Paris keit a ma rancazet e-unan. Hag e re ma tremene Per Luna he amzer en d'ez-han ar rouantelez Visant na ehane na he baoueze da lalhourat evit rouantelez an Env, en eur zougenn ar dud da garet ha da servicha Jesus-Christ. Ober a reaz e Frans ar pez en doa great guech-all e kemeret leac'h ma voa bet e Spagn.

Prezeg a reaz aliez, ha dre he sermou e c'houneze da Zoue eun niver braz a eneoù, rag caled e rankie beza calon ar pech'her na zeuje da veza boug o velet santelez ar zant pe o clevet he sermou. Ken anat edo d'an oll e teue Doue da barlant dre he c'hinou, ma teue an dud braz ha bian, paour ha pinvidik, gand ast d'hen sillaou.

Evid hen, e leac'h caout santimanchou huel anez-han e-unan eyit kement a istim a reat anez-han, ne rea nemed cresski he humilite; ha sulvni e n'em roe d'al labour suje hoantecoc h aze e poagne da c'houmiteneou da Zoue.

Ar falz-Pab Clement VII o veza dent da vervele e Avignon, ar c'huac'h a viz guengolo 1394. Per Luna a voue laket en he leac'h gand he gostezen, an 28 euz ar mevez miz. Ar falz-Pab nevez-man a guemeraz an hano a Beneat XIII. Hoguen, dre m'en devoa eun istim vraz evit Visant, e scrivaz d'ez-han dont de guichen da Avignon evit ma c'helje goulen kuzul digan-han ha rei d'ez-han ar garg euz lie ene. Ar falz-Pab-ze a dremene e Frans hag e Spagn evit beza ar guir-Bap. Visant eta, o credi edo ar guir-ben euz an iliz hen galve, a za gand ast da Avignon, e pez leac'h en em ro goaz egued biscoaz da labourat evit selerijenna ar bobl dre he vertuz, he scrijou hag he gomzou. Er mare-ze, ervez m'hen gouzer ez oa daou den hag a zongue an hano a Bab, petra benag ne hell beza morse nemed unan: An Iliz Catolig a ioa ive eta rannet etre daou rum: darn a grede ez oa ar guir gand Beneat, ha darn-all gand ar Pab-all. Visant a lenske calz daelou o velet an dizunidiguez-ze en Iliz Jesus-Christ, ar pez lien lekeaz da lavaret da Bap Avignon, e raje mad evit peoc'h ar gristenien en em zizober euz he garg. Beneat ne glevaz ket gand fongue ar c'homzou-ze; cousegoude, evit senti euz he gonsessour, e ra destum eun niver braz a eskibien santel, evit goulen kuzul digan-ho. Mez an eskibien ne heljont ket en em glevet var guement-ze, ha Beneat a jommaz adarre en he garg. Visant neuze o velet n'edo ket deut abenn euz ar pez en doa c'hoant da ober, a n'em guemer en eun doare nevez: Scriva ra lizer var lizer da Sigismond, a ioa neuze e Catalogn, da Charles VI, roue a Frans ha da Vartin, roue a Aragon, evid ho fedi da vouga pelloc'h ar skuer fall a rene en Iliz. Liziri Visant ne gonejont ket d'an douar, pell ahano: rag prest da c'houde e voue savet eur c'houeil general er gitear a Coutans, evid lacat ar guir da vont d'he leac'h. Mez disc'hrichenna an droug, n'eo ket eun dra ezet da ober, hag, evel m'hen guelimp, ar peoc'h ne voue ket roet ken buan ze d'an Iliz.

BODEUR.

(Eur pennad-all divezatoc'h.)

MISSION SANT-THEGONNEC.

(TREDE PENNAD.)

Adarre Mission Sant-Thegonnec! Ne scuzio quet eta gant he Vission a Zant-Thegonnec?

Nan, va mignoned, ne scuisfen quet o parlant deoc'h euz ar Mission caer-ze. Me am beuz det — ha pa lavaran me, an dra-ze a ziniti ni oll Sant-Thegonneguiz, — ia, me am beuz bet quement a blijadur epad an deveziou santel-ze re vuban tremenet, me am beuz dalc'het em spered ac em c'halon, na n'em beuz, eur zonz quen dous, quen duduz euz hor Mission binniguet, mar carfen comz euz aneza d'ar bed oll. Pardonit d'in eta, va

mignoned, mar tenan beuz vech c'hoaz, — homa a yezo gouscoude, h'm diveza cauzaden, — da barlant deoc'h e Feiz ha Breiz euz hor Mission santel.

Ne gomziz o deoc'h er pennad-ma, nemed euz ar zultvez ma voelketzet hor Mission, euz an traou tremenet endrop tenez d'an deiz caer-ze.

Ar zul, deiz evit cloza ar Mission, a c'houlaouaz caer ac a jommaz caer penn-da-benn. — E voamp en eil zultvez euz a eisvetez ar Sacramant, — Sant-Thegonneguiz, et e peoc'h ac e grac Doue da gousquet d'ar zadorn da noz, a zavaz adarre e peoc'h ac e grac Doue ha mall gantho mont d'ar boung da recao Jezuz ho Zalver.

D'an diou zadornvez or boa communitet evid hor mission, mes d'an diou zultvez e communitet evid an anaon, evid eneo hor c'herent, hor mignoned ha re-all. Re ar zizon guenta a gommunitet d'ar zul, 10 euz ar miz, ha re an eil zizon d'ar zul ma voelketzet ar Mission. Ne ouffen quet e vez chommet hini ebet ac'ha-nomp eb ober ar gommunitet-ze, hir lod diou, evid an anaon queiz.

Martreze calz ac'hanomp, sivoaz! o devoa eun tam ancounac'heet eneo hor zud et da anaon. Mes ar Mission en deuz digasset sonj deomp euz anezo, ha Brema ni a bed calonnec evitho, ni a va da gommunitet evitho, ni a guendalc'ho da vont da scuita an douar binniguet var ho bezyou evid doussat ha mouga ar flammou dre here ezint purifiet er purgator. Eneou euz hon tadou ha mammou, eneon euz hor oll guerent ac euz hon oll mignoned, pardonit deomp mar hor beuz, eur maread, ancounac'heet ac'hanoc'h. Eviziquen n'er grammp mui: eviziquen ni a zilaouo ar vouez euz oc'h hirvoudou, ni or bezo truez ouzoc'h, ni a bedo evidoc'h, ni ho sicouro euz hon oll galloud da zont er maez euz al lec'h-se a boanyou scrijuz ha da vont d'ar baradoz. Ha pa zaimp ni, eun deiz, d'hon tro, da vesca hon esquern gand ho re e guered hor parrez, oc'h eneo, piguet deja da c'hoar Doue, a bedo evidomp, ar zifempo ac'hanomp; ac hor bugale, chommet var hon leroc'h er bed-ma, hor zicouro ivez evel ma or bezo sicouret ac'hanoc'h. Doue, dre he vadelez, a droio ho c'halonou da ober evelse.

Ar vintinvez a dremenaz duduz, santel, ac ar pardaez a zeuaz. D'an taul a viz heur ar c'hlezer dre ho zon joaiz a c'halv an dud d'ar gousperou. Goude ar gousperou ar brocession a va e maez evid mont da Groaz ar Mission. E zeer d'he binniguet a zont.

An dud a zo laqueet var zion renq a bep tu d'an hent, tri costez oc'h costez e pep renq, abalamour d'an niver braz euz an dud. Tud ar barrez a voa deja ouspenn daou vil anezo, ac euz ar parrezyou tro-var-dro e voa diredet d'ar zolanite ouspenn pemp mil den.

E creiz etre an diou renq e ma ar veleyen ac ar re a zoug ar c'hoazyou, ar banyetou ha drapellou all.

Ar merc'hed a zo er penn araug ac ar voazed varlerc'h ac oll e canont c'hoantec' litanioù ar Verchez ha cantiou.

Imach an-Itrene Variacav zoudouget mar, bunostegad doug pe bradard, gant c'hoazec'haer c'hi yadoud, euz ar barrez, guisquet e guenn. Tud suz ar barrez a zont.

Ar penn queptare euz ar procession m'zo daja digouezet bete Croaz ar Mission, pehini a zo splendet var eun huelen, eun anter quart leoc' euz ar boung, a erpehn all e ma quet c'hoaz er maez euz ar vered.

Ar Croaz ar Mission edo deja en he zao pa erruaz ar procession.

D'ar ar groaz, herp outhi, edo savet eun tam cadorzemon, quen pennet brao, evid an Tad. Ar bobl o veza en em zasonnet er zithoz euz Croaz ar Mission, ac en daou hent a bep tu d'ar c'hloz, an Tad Forestour a bign var ar gador-ze, ac ac'hanoc' sermon da zeiz mil den da peubenta. He vouez a zo, quer scler, ha quer cre savel maniguet deff he, scuzet tam ebet, epad an diou zizunvez euz ar Mission, he gomzou, distaguet mad ha abuet euz he galon muioc'h egued euz he gorzen, a ya deo, idevizid ac'hanomp, amzer dous, tener ha touchant, da zion squarn ha muioc'h c'hoaz da galonou an oll. Daelou puill, mes dous, a red euz a zaoulagad an azistanted.

Ar zernomp achuet, an Tad, abarz disquen, a vinnig ar groaz ac a hoc' dezi. An Autrou Person a bign ive var ar gador zernomp eyit peoc'h d'ar groaz santel. Ar veleyen all ne lignont quet, mes peoc'h a reont da droad ar groaz. Ar bobl oll ar a vevlho.

Ar procession a ziblas neuze evid distroi d'ar bourg. Ar re guenta erruet en em daut a foul en iliz, pehini en em gav eb dalc' leun tenn, quen couchet an dud enhi, ma n'eo deuz quet plasi da zaoulina; pas soquen d'en em dreiz an anter yrasa euz ar bobl a renq chom er vered.

Pa antreaz an dud en iliz, eni distro gant ar procession, e zont anezi sclerijennet, caer gant eun niver braz a c'houlou var elum.

An Tad a bign adarre er gador zernomp. Lavaret a ra d'ar bobl e ma ho Pastor o vont da rei dezo bennoz ar Pab gant eun induljans plenier. An Autrou Person a bign bed var droad an anter ac'hanoc' ro gant joa d'he zavet d'he ar vennoz abostolie, ractal goude e ro dezo Belvediction ar Sacramant, ac e caner an Te Deum evit tu gardaat Doue euz an oll gracou recevet.

An Tad, e chommet var gador epad quementse, a ra neuze da Zant-Thegonneguiz ha zernomp diveza evit lavaret dezo quenavezo. Oud mas voa bet touchant an Tad e tal ar groaz, ama e teugdanneza c'hoaz touchantoc'h. He gomzou a gouez evel ar gliz euz an. Ee var an ol galonou, a ya don tenho ho zenera, ho laca evel da deuzi. Daelou druz, mes didrouz, eb erina difronc, a red euz daoulagad an oll, daelou duduz pere a zeu quentoc'h euz ar galon egued euz an daoulagad.

Ar zernomp achuet, e caner eur c'hantic, ac an oll en em dena pehini, d'he dud. An Tad ac an Autronez Beleyen all a va d'ar presbital.

Souden ec'h erru ar presbital ar pennou euz ar barrez da drugarecat an Tadou, ac e clever eno adarre,

euz an eil tu ac euz eguile, mouez ar c'halonou o parlant, mes e berr goazou.

Var dro euz heur nemed quard an Tadou a lavar quenavezo da re ar presbital ac a barti evid mont d'ar garg da guemer an hent bouarn. An Autrou Person ac ar Veleyen all a va d'he ambroug. Voeturyou en em gave prest evid ho douguen d'ar garg, pehini a zo lost, ha eul leoc' euz ar presbital. An Autrou Person ac an Tadou a bign er memez voetur, ac an Autronez Beleyen all, gant pennou euz ar bourg, e voeturyou all.

Ne vouezet nemed ar presbital ac er bourg, ha pas eun hanter heur araug er bourg, pebare e llye partial an Tadou — n'o devoa quet lavaret da be boent e partizent, — ha gouscoude, par zortzont euz ar presbital evid mont d'ar garg, e voa deja e toull an ol eun neubend voeturyou oc'h ho gortoz, lod evid ho douguen, lod evid ho ambroug. Mes ar pez a voa c'hoaz touchantoc'h, an hent adalec ar presbital betec ar bourg ac en tu all, edo leun a dud, diredet, pa o devoa clevet da lavaret quenavezo d'an Tadou, ac oc'h en em dauter var ho daoulin a bep tu d'an hent, an daelou en o daoulagad ac an anaoudeguez vad en ho c'halon, e c'houllennent digantho ho bennoz en eur lavaret quenavezo dezo. An Tadou a voa touchet, an Autrou Person a voue evel eur vadalen ac a lavaret an Tad a prestour. Binniguet eta an dud vad-ze, binniguet va farreziant, quer eur vech c'hoaz. Ac an Tad, en he zao er voetur, a vinniguet gant, teneridiguet, dre ma yee, an dud en daou du d'an hent.

Etretant oll gleyer ar barrez, lanquet e brall, a vesque ho mouez gant m'guezyou an dud vad-ze evid lavaret quenavezo d'an Tadou.

Digouezet dirac Croaz ar Mission, Croaz ar Mission a zo var an hent euz ar bourg d'ar garg, an Tadou, ar Veleyen all ac an oll, a zisquen evid mont da zaludj ar Groaz santel, da lavaret dirazhi eun bedennic ha da bocat dezi.

Ar Groaz-se a yezo eviziquen evid Sant-Thegonneguiz evel eun arvouez pehini a zigassorda zonz dezo euz ho Mission, evel eur prezegour pehini a rafresco en ho spered an oll guiryonezou mad o deuz clevet epad ar Mission binniguet-ze. Ar Groaz-se — lavaromp se en eur dremen — eunan euz ar c'haera croazyou euz ar vro, a zo, abaque ar Mission, da rempredet calz da zul ha da vouel, ha soquen var ar pemdez. Da zul ha da vouel Sant-Thegonneguiz a va di a vandennou da lavaret ho sedennou ha da c'houid induljansou. Var an pemdez e caffot ive dalc'had eunan bepac daoulinet var troad ar groaz ac o peoc'h dezi Croaz santel, chommit gant an oll dremen, Galvi Sant-Thegonneguiz da zont bepred stanc evel brema da zaoulina var ho pazennou, da b d' dirazoc'h da bocat deoc'h. Queit ha ma raint evelse, ar zonz euz ho Mission ne varvo quet en ho zouez, ac ar vad en deuz he gret dezo, ne yezo quet collet. Evelse bezet greet.

Eul Labourer a Zant-Thegonnec.

Hano ar Zant evit ar Sizun-ma.

- DILLUN, 19 Eost. — Sant Ian-Fransez Regis.
- DIMEURS, 20. — Sant Bernard, abad ha Doctor euz an ilis.
- DIMERC'HER, 21. — Santez Jannet-Franseza Chantal.
- DZIOU, 22. — Eisvet an Assomption.
- DIRGUERER, 23. — Sant Filip Benitij.
- DISSADORN, 24. — Sant Bartholome, Abostol.
- DISSUL, 25. — Unnevet sul goude Pantecost. Gouel ar Galon Santel a Vari.

Abostol ar zul:

Va breudeur, ne jom ken ganen da ober brema nemet digas deoc'h sench euz an aviel am eus prezeguet deoc'h, an aviel oc'h eus recevet, da behini e talc'hit mad, ha dre behini e viot saveteet, mar hen c'hendalc'hit evel ma em euz he brezeguet deoc'h, rag anez e ve e vean o pe digumeret ar feiz.

Desket em eus deoc'h da guenta ar pez so bet desket din va unan, ez eo, ervez ar scritur, Jesus-Christ maro evit hor pec'hejou, eo bet sebeliet, hag an trede dez eo savet a varo da veo, ato ervez ar scritur; Ez eo en em ziskuezet da Cephas (da Ber.) ha neuze d'an unneg Abostol; goudeze eo en em ziskuezet var eun dro da ouspen pemp cant euz hor breudeur, hag ar vrendeuz-ze zo beo c'hoas lod anezho, lod all ive a so maro; goudeze eo en em ziskuezet da Jakez, ha neuze d'an oll ebstel. Da ziveza oll eo en em ziskuezet lin-me cornandon ma zoun; rag me eo an distera euz an ebstel; ne donn ket din da veza galvet abostol, rag great em euz ar brezel da ilis Doue. Hoguen dre c'hras Doue ez oun ar pez ma'z oun, hag he c'hras ne ket bet difrouez enhon.

Kenta lizer Sant Paul da gristenien Corinth. XV. 1. G. M.

KELEIER.

Evel ma on doa lavaret er sizun dremenet, an Aotrou'n Escop en deus roet an urziou dissul diveza. Dre ma zoa braz an niver euz ar glouer a die receo an urziou, en deus roet, d'ar zadorn, e chapel ar seminer pe ar c'hlouardi, an urziou bihan hag ar gurunen pe an tonsur. Hoguen an urziou braz, ar veleguiach, an avielach hag an abostolach en deus roet d'ar zul, er Gatedral. An Aotrou'n Escop a zo falvezet dezhan rei an urziou en ilisatedral, abalamour chapel ar c'hlouardi so enk, ha nebeut a dud a ell kemeret perz er solanite pa vez great eno; ar gatedral avad a zo frank ha dieub da ober eun dra evelse. Dre-ze ive ar ceremoniou a ioa cals assoc'h da ober, ha cals caeroc'h int bet; hag ar guerent couls hag ar re all o doa c'hoant da velet rei an urziou a ioa el levenez hag a drugareka an nep en doa evelse roet tro dezho da ellout kemeret perz er gouel caer-ze.

Setu ama hanoiou ar glouer o deus recevet an urziou.

BELEHEN.

An Aotronez:

- Ian-Eozen Lamour, euz a Blabenneg.
- August-Mari Bayon, euz a escopti Guened.
- Ian-Eozen Pouliquen euz a Landiviziau.
- Fransez-Nouel-Mari Brignou, euz a Vontroulez.
- Joseph-Charles Brisson, euz a Blouare.
- Ian-Vari Cozic, euz a Gommanna.
- Isidor-Ian-Mari Guyader, euz a Roscoff.
- Eujen-Mari Janvier, euz a Bont n Abat.
- Clauda Mari Moal, euz a Blouenan.
- Hercul-Mari Peron, euz a Sant-Salver-Brest.
- Fransez-Aime Roul, euz a Landerne.
- Felix-Hyacint Buors euz a Lesneven.
- Bernard-Joseph Gauthier, euz a Vontroulez.
- Eozen Jezequel, euz a Blouvorn.
- Bernard-Lois Lallemand, euz Ar Fouillez.
- Jul-Mari Ar Bihan, euz a Vrest.
- Joseph-Mari-Eozen Ar Bot, euz a Zirinon.
- Adolf-Mari Ar Bourc'his euz a Vrest.
- Fransez-Mari Queau, euz a Ergue-Armel.
- Paul Ar Rouz, euz a Blouzeniel.
- Joseph Marzin, euz a Blagogif.
- Charles-Mari Naveau, euz a Gastel-Paol.
- Ian-Guillon Pelle euz a Brimelin.
- Ian-Fransez Queguiner, euz a Henvic.
- Loiz-Herry Roue, euz a Gastel-Paol.

AVIELERIEIEN.

An Aotronez:

- Guion Burel, euz a Gastel-Paol.
- Ian-Eozen Berriet, euz a Gleden-Cap-Sizun.
- Lois-Mari-August Berthelon, euz a Vontroulez.
- Per Cabioc'h, euz a Gastel-Paol.
- Ian-Vari Caradec, euz a Ergue-Gaberie.
- Ian-Renan Celton, euz a Boullann.
- Eozen Cleac'h, euz a Loctudy.
- Loiz-Emil Crozon, euz a escopti Naonet.
- Clauda Ar Rouz, euz a Vezpaol.
- Tremeur-Lois Queneader, euz a Gleden-Poher.
- Loiz-Renan Suzeau, euz a Boullaouen.

ABOSTOLERIEIEN.

An Aotronez:

- Clet-Mari Bonis, euz a C'houlilien.
- Fransez-El-Ian-Herri Giblen, a escopti Sant-Briec.
- Ian-Vari Abgrall, euz a Lampaol-Guimiliau.
- Simon-Renan Alix, euz a Loc-Ronan.
- Herve Berthou, euz a Blouzevede.
- Corintin Bicrel, euz a Verrien.
- Edmond-Mari Biorin, euz a S' Salver-Brest (Recouvrens).
- Ian-Fransez-Mari Bizien, euz a Guerhaes.
- Ian-Vari Burel, euz a Gastel-Paol.
- Joseph-Mari Castel, euz a Gastel-Paol.
- Marc-Lois Cevaer, euz a Loperec.
- Olier-Mari Derrien, euz a Landiviziau.
- Alan-Mari Drezen, euz a Benmarc'h.

An Aotronez:

- Clet-Mari Fily, euz a Gleden-Cap-Sizun.
- Eozen Guillou, euz a Blounevez-Lochrist.
- Ian-Loiz Henaff, euz a Lanhouarne.
- Fransez Hervel, euz a Hanvec.
- Ian Jourdren, euz a Bleyben.
- Fransez Kerbrat, euz a Blounevez-Lochrist.
- Mathurin Ar Rouz, euz a Gastel-Paol.
- Fransez-Mari Levezo, euz a Blounevez-Lochrist.
- Aime-Mari Madec, euz a Lanmeur.
- Lois-Nicolas Monfort, euz a Landiviziau.
- Eozen-Mari Pellan, euz a Vilers.
- Ian-Vari Roudaut, euz a Blouguerne.
- Amedec-Mari Salaun, euz a Borspoder.
- Ian-Mari Serjant, euz a Veuzec-Cap-Sizun.
- Charles-Mari Siou, euz a Blouzeniel.
- Ian Siou, euz a Blouzeniel.

AR PEVAR URS BIHAN.

An Aotronez:

- Per Ar Bail, euz a Landerne.
- Ian-Vari Baler, euz a Landerne.
- Corintin-Mari Biger, euz a Loctudy.
- Herve Bodenan, euz a Blouvorn.
- Mikeal-Ian-Vari Boulic, euz a Vipavas.
- Gabriel-Mac'harit Breton, euz a Lanmeur.
- Alexandr-Mari Cloarec, euz a Lanmeur.
- Ian-Clauda Coat, euz a Vontroulez.
- Ian-Fransez Guiec, euz a Blouescat.
- Felix-Bonavantur-Mari D'amphernet, euz a Guemper.
- Amand Gadon, euz a Gonkerne.
- Guillou Goasgnen, euz a Daule.
- Eozen Godec, euz a Blougoulin.
- Eozen-Mari Guevel, euz a Dreoul.
- Ian-Vadezour Guillou, euz a Vimillau.
- Alan-Mari Hernot, euz a Landiviziau.
- Guillou-Ian Jaouen, euz a Blouegat-Guerrand.
- Lois Keraudren, euz a Grozon.
- Mari-Stanislas-Nicolas Kerbiriou, euz a Gastel-Paol.
- Per-Mari Kerebel, euz a Blougoulin.
- Dezire-Eujen Kerezeon, euz a Vrest.
- Camill-Guillou-Mari Kerigny, euz a Sant-Salver-Brest.
- Per-Ian Kerisit, euz a C'houlilien.
- Guillou-Alexis-Mari Kerivel, euz a Boullann.
- Ian-Fransez Ar Bars, euz a Blouvorn.
- Eozen-Mari An Denn, euz a Gommanna.
- Fransez-Mari An Dilasser, euz a Verrien.
- Ian-Vari Ar Maoult, euz a Nevez.
- Fransez-Mari Ar Rouz, euz a Gastel-Paol.
- Per-Mari Madec, a escopti Guened.
- Lois-Mari Magueres, euz a Landerne.
- Fransez-Mari Messenger, euz a Henvic.
- Lois-Philip Moal, euz a Blouenan.
- Per-Mari Nedelec, euz a Blobannalec.
- Joseph-Mari Nicolas, euz a Guemperle.
- Mikeal Peron, euz a Gastel-Paol.
- Ian-Mikeal Poulhazan, euz a Gleden-Cap-Sizun.

An Aotronez:

- Joseph-Renan-Mari Rogel, euz a Fouesnant.
- Laurans-Corentin Rospars, euz a Laz.
- Fransez Stephan, euz a Enez-Eussa.
- Laurans-Mari Tourmen, euz a Blourin Montroulez.
- August-Ian-Lois Troussel, euz a Verleskip.

GUERUNEN AR GLOUER.

An Aotronez:

- Sylvan-Mari-Ambroas Liseget, euz a Gastel-Paol.
- Lois-Fransez Simon, euz a Blouvorn.
- Fransez-Lois Abernot, euz a Lesneven.
- Fransez-Mari Abian, euz a Blouzeniel.
- Henri-Eozen-Mari Berriet, euz a Gleden-Cap-Sizun.
- August-Joseph-Mari Coat, euz a Vontroulez.
- Jakez-Ian-Eozen Couloigner, euz a S. Servad.
- Fransez Coum, euz a Dreglonou.
- Ian-Eozen Danze, euz a Gleden-Cap-Sizun.
- Ian-Vadezour-Leon Coataudon, euz a Guerlunan.
- Eozen-Mari Fagot, euz a Landiviziau.
- Eujen-Renan-Nicolas Fechant, euz a Zouarnenez.
- Olier Frances, euz a Guernilis.
- Fransez-Mari Geffroy, a escopti S. Briec.
- Joseph-Mari Guenon, euz a Bloudalmeze.
- Joseph-Mari Gueguenat, euz a Grozon.
- Camill-Mari Jezequel, euz a Loc-Ronan.
- Lois-Fortune-Mikeal Jossin, euz a Gonkerne.
- Emil-Mari Keruel, euz a S. Sylvan-Brest.
- Alan-Mari An Abasq, euz a Blouguerne.
- Fransez-Mari Laurans, euz a Rosnoen.
- Ian-Vari Ar Gall, euz a Blouvorn.
- Lois-Goulec-hen-Mari Ar Gall, euz a Lesneven.
- Ian-Joseph Ar Bras, euz a Gleden-Poher.
- Fransez-Mari Ar C'hoz, euz a Blouazel.
- Eozen Ar Grand, euz a Langolen.
- Emil-Jakez Livinec, euz a Vontroulez.
- Ian-Vari Maguet, euz a S. Thegonnec.
- Ian-Fransez-Mari Martin, euz a Gommanna.
- Ian-Vari Menguy, euz a Bloudalmeze.
- Victor-Fransez Milin, euz a S. Marc.
- Jakez-Mikeal Moris, euz a Blozevet.
- Christof Paugam, euz a Blougoulin.
- Ian-Eozen-Mari Penamen, euz a C'houlilien.
- Eozen Penors, euz a Gleder.
- Charles-Mari Peron, euz a Gastel-Paol.
- Ian-Vari Pilot, euz a Blouenan.
- Eozen-Mari Quentric, euz a Vodhis.
- Fransez Rolland, euz a Blounevez-Lochrist.
- Per-Lois-Mari-Renan Rolland, euz a Vontroulez.
- Eozen-Mari Richou, euz a Vodhiz.
- Paul-Mari Rouilly, euz a Vrest.
- Ian-Eozen-Mari Thepaut, euz a Blougonven.
- Ian-Noel Thymeur, euz a Enez Sizun.
- Ian-Fransez Tonard, euz a Gastel-Paol.
- Fransez-Clauda Vigouroux, euz a Loperec-het.

Evelse an Aotrou'n Escop en deus great er vech-ma pemp beleg varnuguent, unneg avielar, nao abostoler

varnuguent, ha roet an urziou bihan da zaou gloareg ha daounguent, hag ar gurunen da c'huec'h ha daounguent.

Beleien canton Plouescat o deus savet pemp cant lur evit lacat eur zouav e servich hon Tad Santel ar Pap.

Setu ama hanoioù ar re a so hanvet, pe o deus bet ar muia mouezioù, (Lavaret a ran ar muia mouezioù gant aoun na deufe clem a enep unan bennag ha ne ve ket hanvet goudeze.)

Evit ar C'honseil general :

- Canton Brice, an Aotrou Gueguen.
- Canton Conkerne, an Aotrou Cont Chauveau.
- Canton Daoulas, an Aotrou Goubin.
- Canton Lannilis, an Aotrou Morvan.
- Canton Landerne, an Aotrou Bonamy.
- Canton Landiviziau, an Aotrou Abgrall.
- Canton Lanmeur, an Aotrou Kersauzon.
- Canton Montroulez, an Aotrou Bienvenu.
- Canton Plouescat, an Aotrou Dein.
- Canton Kerhaes, an Aotrou Gaubert.
- Canton Castellin, an Aotrou Lacoste.
- Canton Arzano, an Aotrou Keroualan.

Evit Conseil arrondissement Kemper.

- Canton Kemper, an Aotrou Veisseyre.
- Canton Conkerne, an Aotrou Guillou.
- Canton Fouesnant, an Aotrou Cain.
- Canton Pont'n Abat, an Aotrou Paisant.
- Canton Rosporden, an Aotrou Cotten.

Ar bloas 1867 a zigouez enha ar pezh so rouez da velet. Ne deuz enha mare huel, mare braz ebet.

Ar retred evit ar veleien so prezeguet gant an tad Boylesve euz a gompagnunez Jesus.

An ed so chomet a za en derveziou tremenet. An amzer vad so deut eo so, me oar vad, kirieg a guementse. Hoguen ker avoualc'h eo a vrema, ha ma talc'h da vont ker ker-ze ar re so o verzà n'o devezo ket a leac'h d'en em glem.

Eur goal darvoud so c'hoarvezet en hent honarn etre Pariz ha Lyon. Eun trein, hanvet *train a blijadur*, etre Oranj ha Pariz, a so bet dihenchet pe diborrodet: Diou pe deir barren houarn a vanke en unan euz ar porrojou, ha n'oa ket bet a amzer da lacat re all en ho leac'h. C'huec'h den so bet lazec'h, hag ugent, lod a lavar tregont, a so bet gloazet.

Eur merour a voa eat n'ens ket pell da baea he vestr, hag hema a voa o leina neuze oc'h taol gant tud he di. Ar merour a voa eun nebeut a voa en he za dirazho. Barz ar fin ar mestr a c'houlennaz outhan : ahanta, Ian, petra so a nevez du-ze ?

— Eun dra farsuz avoalc'h, Aotrou, so digouezet du-ma.

— Petra zo digouezet-ta ?
— Eur gazeg so du-ma hag e deus bet tri ebeut bihan.

— Tri ? Mes ar gazeg n'e deus nemet diou vronn, ha petra-rai an trede ebeul ?

— E leac'h, Aotrou, evel a ran-me brema ive, sellet.

Lavaret on euz, eun teir pe beder sizun zo, penaus caera tra, ijinussa tra a voa marteze en *exposition*, e Pariz, ar pezh a denne ar muia ar zell, e voa eun horolach hag a verke an amzerioù, great gant eur beleg a Rom, eun tad jesuist, an tad Secchi. An horolach burzudus-ze a jom ato an oll souezet da zellet outhi, hag an tad he unan a dremen bemdez c'huec'h heur amzer e kichen he horolach evit diskuez d'an hini a gar penauz eo great.

En dez all edo an tad Secchi e kichen he horolach, hag en doa troet he gwein dezhi evit sellet oc'h an traou a voa en tu all. Digouezout a ra eun Aotrou hag en doa gnelet an horolach c'hoas, credabl, mes ne anaie ket an tad. O velet eur beleg evelse o sellet oc'h traou all ha troet he gwein d'an horolach, ez a da skei var he scoas,

— Ne ket aze eo deoc'h sellet, emezhan, ama eo. Sellit, an horolach-ze eo caera tra so ama da velet, hag a so great, va mignon, gant eur person evel doc'h !

Neuze en em lekea da esplica d'an tad en he c'hiz penauz, gant pebez ijin oa great an horolach-ze. Ar bourc'his n'oa ket cre cre var ar *mecanic* ; aliez e scoe a gleiz, hag an tad Secchi en devoue leac'h da vuse'hoarzin meur a vech oc'h he glevet. N'eus fors, ar blijadur en devoue da glevet ober dezhan he unan meuleudi he horolach, ha da rei euz he bez labour eun *explication* e pehini, douetus, n'en divije morse sonjet he unan.

Guelit pebez min a dlie ar bourc'his da ober pa vije deut da c'houzout eo d'an hini en doa great an horolach ez oa falvezet dezhan rei kentel ! G. M.

PRIZ AN ED.

KEMPER. — 10 Eost.		PONT'NABAT. — 8 Eost.	
Priz ar c'hant lur.		Priz ar c'hant lur.	
Guinis....	46 lur, 41 c.	Guinis....	46 lur, 67 c.
Segal.....	43 lur, 50 c.	Segal.....	42 lur, 08 c.
Eiz.....	9 lur, 66 c.	Eiz.....	8 lur, 30 c.
Ed-du....	9 lur, 76 c.	Ed-du....	10 lur, 73 c.
Kerc'h....	9 lur, 89 c.	Kerc'h....	11 lur, 63 c.
Avalou-douar	5 lur, 36 c.	Avalou-douar	5 lur, « c.
MONTRULEZ. — 5 Eost.		BREST. — 8 Eost.	
Priz an hectolit.		Priz an hectolit.	
Guinis....	23 lur, 75 c.	Guinis....	27 lur, 80 c.
Segal.....	« lur, « c.	Segal.....	24 lur, 98 c.
Eiz.....	13 lur, 57 c.	Eiz.....	13 lur, 44 c.
Ed-du....	9 lur, 04 c.	Ed-du....	11 lur, 24 c.
Kerc'h....	10 lur, 84 c.	Kerc'h....	10 lur, 70 c.
Avalou-douar	10 lur, « c.	Avalou-douar	9 lur, 80 c.

Ar Gerant: AR. DE KERANGAL.

Kemper, moulet gant AR. DE KERANGAL, Moulet an Escopit.

FEIZ HA BREIZ,

KELOU A BEP BRO, HA KENTELIOU VAR BEP TRA,

DIGASSET BEP SUL

Da guement Christen a goms ar brezounee.

Eun Abonnement d'ar Gazeten a goust :

- Evit eur bloas..... DAOU SCOUET.
- Evit c'huec'h miz..... EUR SCOUET.
- Evit tri miz..... C'HUEC'H REAL.
- Eur gazeten ebken..... DAOU VENNEC.

Ar bacamant a dle beza great araog caout ar gazeten.

KEMPER, 24 Eost 1867.

Var an douar ne gaver netra hag a bliche d'an oll ; ar pezh a ra plijadur da lod, a ra peurvuia displijadur da lod all. Evelse ar gouelioù caer so bet e Toulouz en honor d'ar zantez-nevez Germana o deus laket da zridal calonou an oll gristenien vad euz ar vro-ze. Hoguen epad ma voant el levenez, e voa eur rum all hag a voa droug enho. An dud difeiz ne blije ket ar gouelioù-ze dezho tam ebet, « petra, emezho, ober kement a lit da eur vessaerez abalamour da eur burzud bennag a leverer e deus great ! ha ni a lavar ne deus ket a burzudou, ha ne fell ket deomp e ve ! » Ha penauz e respont santez Germana da gomzou evelse ? oc'h ober burzudou nevez ; o rei ar c'hlevet d'ar re vorzar hag ar gnelet d'ar re zall epad ar gouelioù a reat en he enor. Evelse evit an hini a lavarfe n'eus ket a sclerijen, Doue a laca an heol da bara, hag a ra d'an den discredic plega he zaoulagad, evel ma ra d'an den difeiz beza test he unan euz ar burzudou a ra pa blich gantha.

Ia da, a lavar c'hoaz an dud ze ep feiz na Doue, emaoch aze o renta honor da relegou eur vessaerez, hag ar pezh a honorit ne deo nemet eur c'horf maro ! Ia sur, an Ilis Santel ne rent honor da gorf an den, da viana evel ma comzomp ama, nemet gonde ar maro. An dud difeiz, evit guir, so guell gantho honor pe kentoc'h evit comz evel dho, *adori* corfou beo ; hoguen an Ilis ne ra ket evelse. Ar relegou a honor ar gristenien a so e guirionez corfou maro, pe mar kirit, an nemorant, an eskeru euz a gorfou hag a so bet scoet gant ar maro. Mes gouzout a reont ez int an nemorant euz a gorfou hag a so bet enho eun ene pehini so hirio euz en Env, dre ma zeo kementse discleriet gant an Ilis pehini ne ell ket fazia. Gouzout a reont ez int eskern, corfou pere, evitho da veza maro brema, a zavo eun deis leun a vuez, caer ha skeduz, evit ren gant Jesus-Christ en Env epad an eternite. Ha setu perag ar gristenien, setu perag an Iliz a rent honor d'ar relegou-ze. Hag an dud difeiz a

ALIOU.

Ar scrijoun a ve c'hoant da lacat er gazeten a dleer da adressi oli d'an Aotrou MORVAN, Beleg e Kemper.

Ar paemanchou a dleer da adressi d'an Aotrou SALAUN, ebken. An abonamant a guemerer e, d'an Aotrou SALAUN, librer, ru Kereon, e Kemper.

dle gouzout ne all ket an Iliz en em dromplav ar traou-ze. Gouzout a reont pe da viana aze, e ve dezho gouzout pegement a enclascou a ra an Iliz araog discleria eo eun den sant ; pegement a evez a laca evit anaout relegou ar zant, evit miret na vent mesket gant eskern tud all.

Bez ez eus dreist oll eur merc evit anaout relegou ar zant, eur merc hag a so red d'an oll da anaout hag ar merc-ze eo ar burzudou a reont. Guir eo an dud difeiz a lavar ne gredont ket d'ar burzudou. Hoguen n'eus fors, pa veler eur relegou, evel re santez Germana, o renta ar iec'hed d'ar re glan, ar gnelet d'ar re zall, ar c'hlevet d'ar re vorzar, ha kementse evit touch outho epken pe evit poket dezho, pe zoken d'an arched ma emaint enha, eo red anzañ ez euz eur vertus bennag en eskern-ze, e deuz an ene so, an eskern-se dezhi eur c'hallout bennag dirag Doue. Rag ha pa lavarfac'h ne deo ket an dra-ze burzudou, da viana ec'h anzavot ne zigoez ket kementse evit touch oc'h eskern ar c'henta deut. Ha c'hoant am befe da lavaret d'an dud-ze pere a scrij' pe a gri a enep ar burzudou, a enep gouelioù an Ilis catolic, a enep an honorioù a renter d'ar zant ha d'ho relegou ; n'o deus nemet lacat en eun arched, ar c'haera a oufet da velet, eskern unan bennag euz ho mignonet, eskern unan bennag euz ar re pere, evel dho, n'o deus na feiz na relijion, ha lacat da vont da douch outho pe da boket dezho an dud-clan pe vac'hagnet, hag e credan ervad e c'helfet lacat claoustrer ar re a iefe da douch outho clan pe vac'hagnet, a deufe ive clan pe vac'hagnet en dro. Doue ne re nemet da relegou he vignonet, he vir servicherien, ar gallout da ober ar pezh a c'hallvompni burzudou.

Rom. — Abaoe anter mis gouere, an domder a so braz e Rom. Hon Tad Santel ar Pap o velet e coeze gant ar c'hrouez-ze cals tud clan er c'harterioù paout a gear, en deus laket pemp mil lur varnuguent etre daouarn personet ar parrezioù eleac'h ma zeus tud clan, evit ho

rei d'ar reizomeg, ha lavaret en deus dezho e roje c'hoas mar bize izom.

O clevet kementse, ar bopl ne vomie ket petra da ober evit diskuez d'ar Pap he anaoudeguez vad. Ar re dreist oll so o chom en tu all d'ar ster hag etouez pere ez eus muia tud clan, a c'houlenne gullet Pii Nao. Eun dervez, ma tremene dre eno en he garroz, ar Pap so diskennet evit comz outho hag ober plijadur dezho, an oll a grie: Buez hir d'ar Pap! hag e tiskuezent dezhan ar prenecher a scoe var ar c'hamprou a ioa tud clan enho, en eur lavaret: Tad Santel, an hini clan a c'houlenn ho penediction!

E creis kear ne deus ket a glenvet, ne deus a dud clan nemet er c'barteriou paour, hag ober a rer kement a aller da ober evit miret oc'h ar c'hlenvet d'en em skigna.

Rodez. — Mitizien ar guær a Rodez a voa en em glevet evit sevel etrezho mil lur da lacat daou zouav e servich ar Pap. Hon Tad Santel en deus roet da Escop Rodez medalennoù da zigas d'ar mitizien vad-ze, hag hema, distro euz a Rom, en deus lakeat guelver oll vitizien kear evit rei dezho medalennoù ar Pap.

Americ. — Eur gazeten euz an Americ a lavar penauz eur boblat tud anter-c'houez, hanvet ar c'hrec hun-ruz, o deuz a nevez zo, lazet eun Escop, an Aotrou Lamy, Escop Santa-Fe, ha gantha deg missioner ha c'huec'h leanez.

An Aotrou'n Escop Lamy a ioa nevez distro euz a Frans eleac'h m'oa bet o clasc befeien ha leanezet d'he zicour en he vision.

Bez'ez eus gouscoude cazetennoù all ha ne gredont ket e ve guir ar c'helou trist-ze. Divezatoc'h e vezo gouezet ar virionez.

Pologn. — Ar russianet a ra ato ar brezel d'an Iis catholic e Pologn. Casset o deus gantho hag harluet relegon sant Josaphat bet canonizet e miz even. Evel ne ellont ket mont d'ar baradoz da denna ar zant ac'hano, en em guemeront oc'h ar pez a jom euz he gorf var an douar.

Ar pez a laca ar Russianet e counnar oc'h Sant Josaphat, eo eul lavar a so e touez tud Pologn hag a so anavezet gant an oll. Pa voue merzeriet an Arc'hescop, e voa en he gompagnunez eun den santel, eun tad a gompagnunez Jesus pehini hen heuille en he oll veachou abostolic. An tad a voue ive goullet ha goal laket ha lezet evel maro e kichen corf an Arc'hescop. Ar jesuist gouscoude a ioa c'hoas buez enha hag a vezaz eur pennad mad goudeze. Mervel a reas d'an nao var-nuguent a viz even 1667, ha pa edo o vont da dremen-e lavaraz: « Abenn daouc'hant vloaz ama, deiz evit deiz, an Arc'hescop a vezo canonizet, ha kementse a vezo eur goulou deiz evit ar Pologn o fistreï adarre e buez! » An Arc'hescop so het e guirioez laket e reng ar zant ar 29 a even 1867, hag an dra-ze ne blij nemeur d'ar russianet.

Sant-Briec. — Aotrou Escop S. Briec, en eul lizer scrifet da dud he escopti divar benn gouelhou Rom a xerc comzou lavaret gant an Tad Santel he unan, hag a ziskuez pegement e car Breiz-Izel. « Ah! eme ar Pap, anaopt mad a ran aze ar Vretonet ker mad da rei, pere n'o deus morse market din. Roet o deus din va zouavet fidel, ar c'hoard a henor-ze e deus scuillet he goad evit cadon Sant Per; rei a reont din bemdez ho arc'hant. Lavarit mad da dud hoc'h escopti e maint er penn kenta em c'halon. Noz deiz ho bennigan hag e pedan evit pephini anezho. »

Pii Nao a gar ar Frans, eme ar C'hardinal Antonelli, hag e Frans he galon a laca ato Breiz er penn huela. Hano Breiz so dalc'h mad var he vuzellou, abalambar ar garantez en deuz evithi eo an doua so em bezenel. Gouzout a ra ec'h ell conta var Breiz hag er vuez hag er maro. — Ar c'homzou-ze a ra a dra zur, henor da Vreiz-Izel.

Eun Escop, oc'h ober meuleudi messaerez Pibrac, Santez Germana, a lavare: Ar Frans so het difeuet hed ar vech gant Messaerezet. Pa edo ar re a c'halomp hirio Franczien o sevel ho Rouantelez, o comans sevel daveza eur boblad tud cre ha gallouduz evel ma zint hirio, se velomp eur vessaerez, Santez Jenovefa, ofonabar vro oc'h tud cris deut euz a gostez an anteroz evit he distruja. He gullet a reomp, dre he fedennou, o pellaat ar c'hlenvejou speguz a c'hourdrouze goullonder ar vro, ha dreist oll ar guær-benn.

Divezatoc'h pa voa ar zaizon mistri d'ar Frans c'ouls lavaret oll, e velomp eur vessaerez all, Jannet d'Arc, digasset gant Doue evit ho zree'hi, ho c'hontraigu da vont d'ho bro, ha renta he gurunen hag he Rouantelez d'ar guir Roue a Frans. Hirio ive ec'h ellomp esperont e teuo ar vessaerez-ma, dister dirag an dud, mes bras di-rag Doue, ar vessaerez-ma laket brema e reng ar zant gant Pii Nao, da zifen ar Franz a enep kement a glase noazout dezhi diabarz ha diaveaz, ha da drei diarnezh ar c'hlenvejou staguz hag ar goaligner all gant pere e teu Doue avechou da gastiza ar broiou.

An traou burzuduz a velomp hag hon laca souezet er amzeriou-ma a zo danjerou oc'h ho heul. Lacat a reont an dud da vianat an niver anezho var ar meaz. Dilezadur ar parkeier, ar mezion, e pelec'h pep tra a gomz d'ant den euz a Zoue, evit mont er c'heriou elac'h ne veler nemet traou great gant an dud. Hag evelse Doue a an-counac'her hag ar feiz a doc'hora. Piou a ello miret oc'h an dud d'en em deleur evelse er c'heriou?

Piou nemet ar vessaerez-ma ha cals re all evel di o deus bevet var ar meaz en eur stad dister, hag o deus diskuezet d'an oll dre ho skuer e c'hallet eno ive beza euruz, ober he zilvidiguez, ha zoken caout henor ha gloar. Petra veler e kear? Ar re o deus peadra oc'h ober dispignou bras; ne veler nemet pinvidiguez ha braentez var ho zro; hag ar re n'o deus ket a beadra leun a avi, a voarisi oc'h ar re o deuz. Ar pinvidig a veler honoret hag ar paour disprijet. An iliz eta o lacat var an aoteriou ar re o deus bevet paour, a vir oc'h an dud da gaout

aoun rag ar baourentez, ho laba zoken d'he respeti ha d'he henori; ha da lavaret, pasvelont an traou e ar so var an douar: Bez'enz eun dra bennag hag a so c'hoas caeroc'h, guelloc'h hag huelloc'h eguet an traou-ze, me fell din lavaret ar vertus.

Ar vessaerez laket e reng ar zant a zesc'hoomp ive ne dleomp ket caout aoun rag ar boan. Germana e deus great burzudou; hoguen araog ober burzudou e devoa gouzanvet, ha gouzanvet cals.

Aleiz a garfe beza christenien vad ep poan ebet, mont da henri Jesus-Christ ep douguen he groas. Gouscoude ato e vezoz guir ez eo red gouzaon araog tanva an dousder hag a labuenidiguez a ro Doue d'ar c'halonou her servich gant carantez. G. M.

BUEZ SANT VISANT FERRIER.

(PREVARE PENNAD).
Ar rak eta ma oue savet Consil Constans evit gouzout prout an d'ar guir-bap, e tigouezaz da Visant coneza clam ar den ena ioa var ne zhan hen lacaz en eur ober daouzet devez en he amzer diveza: ar vidisined hag an holl dud a vije, var he dro a lavare ne voa esperans eliet evit han da barea.

Et e m'edo er stir fall-ze ar c'hlanvour dre he alter-ben, a velaz e traou he veler Jesus-Christ hag eun niver braz a zez: Jesus a lavaraz d'ez-han pa vije pare pellaat euz ar falz pab Beneat, ha mont da brezec an Aviel dre ar Spagn hag ar Frans. Ar peoc'h, eme Jesus, a vezo roet dizalc'h d'an iliz, mez da c'hedal, it ato d'al leac'h ma lavaras d'he hoc'h grit da bep-unan caout aon rag ar varn genar, hag an deiz-braz-ze ne m'an ket pell. C'ousgoudou eun Jesus d'an den-clan, mervel a reot arak an deiz-ze an eun vro pell aban, en eur vro galvet pen-an-houar (in finibus terræ). Visant a bareaz var an henri Radt a zalc'h gas kementadurez da Veneat euz ar pez en doaglonet ha clevet, lavaret kenavezo d'ez-han ha goulenn he aotre evit ober ar pez a c'houlenne Doue digan aban. Mez Beneat, o veza clevet edo Visant en he amzer divezal, aviaod vont d'ant, he leac'h m'edo ar c'hlanvour sevit beza var sal leac'h en he dremenvan. Peghen euzet he veler ket eta pa vel erru var zu d'ez-han an hini a gred d'ija anter-varo, ha pa glevaz ar pez a lavaraz: « Hen pe dig'ez peb doure da jomm gan-han, en he balez; kionig a reaz d'ez-han. Escopti Valens a ioa nevez maro he Escopti, kionig lavarez d'ez-han escoptiou all eur maread, ha zoken ar garg huel a gardinal. Visant, eb ober fester var ar c'hangon-ze ken enorab, na c'hoanteaz ket libe'hemer. Mez, oc'h en em santout galvet gant Doue da vont dre galz a vroiou da brezeg an Aviel, e lavaraz da Veneat, ne helle ket na chom e Valens, na kemer ar garg euz a eun Escopti setu perac e pede Beneat d'hen lezel da vont e leac'h Doue hen galve. Beneat neuzer o veler en vad ar burzud en doa great Doue o roida Visant anec' hed, hen lezaz da vont ha zoken e rbezaz d'ez-han ar guir da brezeg, da govez hag an oll draou all stag euz he garg dre guement bro ma tremenje.

Visant, oajet er mare-ze a zaou'uguent vloaz, a n em ro neuze d'al labouriou cated a gav ar missioner o vont euz a guær da guær, euz a vro da vro da Brezeg an Aviel. Goude beza prezeguet epad eun tachenad anec' he Veneat e za da Cataloga, epez leac'h e tremen daou vloaz e vez retrejou ha missioner d'ar bobl. Er bloaz 1400 e vez Baredon, hag e teu dre vor da Brovens. En Aix e chom adaleg ar 27 a viz here beteg ar c'henta a viz Kerzu, hag adaleg ar 5 beteg an 10 a viz guenveur euz ar bloaz 1401. Ahane ez eaz d'ar Piemont ha d'al Lombardi. Ere m'edo eno e c'houarvezaz eur burzud braz. Neuz mar ebet, Visant a ioa o sermon en eun iliz, hag en eun tadjou euz he zaoulagad o veza deut da bara var eur rilijuz abouac a ioa euz he sillaou, e teu da lavaret d'an oll he vilz ar rilijuz-ze eun deiz eur prezeguet dreist, ha zoken e velle goude he varo enoret gant an iliz evel eur zant.

Bernardin a Sienn edo ar rilijuz iaouanc-ze. Lavaret a reaz euspen, e teuje ar rilijuz-ze, petra benag m'edo eun dra benag iaouancoc'h eguet-han da gaout eur garg huelloc'h evid he hini, ha da veza muioc'h moulet gant an iliz. Hag e feat, Bernardin a Sienn, a voue discleriet sant ar bevar varn ugent a viz mae 1450, pemp bloaz ha c'huec'h dervez ha tregont arak, ma voue laket Visant e roll ar zant. Euz al Lombardi, Sant Visant, a dudman e Savoia, ha d'ar sentec a viz kerzu 1403, e serv eul lizer euz ar guær a Geney d'he dad superior hapvet d'an a Paynoix. El lizer-ze a roffomp aman varlerc'h, Visant a ro da anaout da superior he urs kement en euz great ha clasket da ober aboue ma z-emab e penn he mission. Evuruz omp da gaout al lizer-ze etre hon daouarn, sig credi a reomp e tuio al lennerien brezonnek d'he den gant al levezon hon euz cavet hon-unan o teleur hon daoulagad varn-hi.

Bopun.
(Euz pennad-all Divezatoc'h).

BREMA HA GUECHALL.

An den o veza e peb leac'h troet oc'h an droug muioc'h eget oc'h ar mad, dougetoc'h da ober fall eget da ober mad, scoliou kear a zo bet a nebendou selonet hag heuliet var ar meaz. Ne ket, va Doue, oh P'nan, ma teufe a gear kement louzaouen divalo, kement trompet a veler var ar meaz, ha na ve ar labourerien anezo ho unan touellet bete re da ober ho fenn fall, da gemeret henchou treuz eleac'h mond var eun tadj, ha gull eo, ha guir e vezo hepred, e peb park da heul an hed mad an hed caer, e sao calz pe nebeud galzou veler ed iadet casaüz. Caer a zo voalc'h d'ouarn ha d'ouarn a zo vezo dillad ha daouarn da voalc'h, e pebun her, beza eun keiz, ho pezo c'houi ar blijadur da vont d'ar poull, ar ober couez ha cannaden, anez ive penaoz ec'h helle merc'hed beva!

Evel ato tud kear ho d'euz ho bod, hag eul loden vraz e calz euz an dizursion a ren var ar meaz. Euz a gear eo en em zilet a zez da zez ar c'hiz ankeniuz a zo bre ma ker stank en hon touez, ar c'hiz evit ar re vian da ober goap euz ar re vraz, ar c'hiz evit ar iaouankizou.

koler, Iannig a goumansas en eur bec'hi da c'hoari tout pe netra gant ar pladou, ar gouer, ar fourchetozou hag ar c'hastolorennoù.

O velet ar rest euz ar madou koaghet, torret ha bru-zunet, ar vugale a en em guzas dindan ar guele ha Ma-dalen a en em dennas da vouela ec'hars mantel ar jimi-nal. Nanig hebken, ar yaouanka euz ar vugaligoù, o velet ar stal peurachuet hag ar micherour heb labour, a redas adren an nor, a ghemeras skudell ar c'hass bihan, he digassas d'he dad en eur lavaret : « Sell, tadik keas, ankounac'heat e peuz skudellik Minet. » Ar c'hom-sou-ze a gouezas var penn ar rouller eghis eun taol hors pe eghis eur varazad zour ien pehini hen diabadouas ; trec'het ha gofoet a vez, e kemer he graouadur var he varlen hag ec'h en em laka da vouela c'huero ; Doue ive her gortoze eno ; eun neubeut goude e pije guelet eun dra dudius meurbet ; rag an oll dud euz an ty a en em zaouline da c'houlenn pardon euz ho faoutou : oll o deus great ar Lromessaou kaëra da bere o deus dalc'het bete vrema. Goude bea unanet an daou bried hem beus ho c'hasset da dy ho c'herent e peleac'h ive hem beus renket gouela pa velis ar gherent hag ar vugale oc'h en em vriata hag oc'h en em bardouni... Setu aze da vi-hana, va c'hoar-gaer, eun divez mad goude eun derou reuzeudik : p'heur, Filomen, ec'h helli-te ober ar me-mes mieuendi eus da amezeien ? P'heur ec'h achuo an teodou bilimus-ze pere a gouez du-ze bemde var an oll eghis eur barrad glao puill ha dre bere pep-unan a rog hag a zisrog renou mad an nessa ? Ne de ket eno eun drouk nevez : pell zo ho tissansionou a laka round ialc'h an dud a lezen hag a ro d'heo friko da zribi.

Du-ma, dre c'hrac Doue, ar vosen-ze zo lakeat er meas ; avechou hebken hor c'houmerzet a diok an eil gant heben eun taolik teod pe eun taolik spillen ben-nak, mes kementse ne denvalaa ket kals an amzer ; da vihana p'en em veler ne zistroer ket ar penn ha ne reusser ket astenn an dorn an eil d'heghele hag ec'h heller pidi Ian ha Jakes da goania heb aoun na deuffent d'en em zislevi araok divez koan ; mes du-ze an oll amezeien zo enebourien an eil d'heghele ; mar dan da velet Per, Paol ne vo ket kountant ; ma teu Soaz d'am c'houez, Channet a vouzo hag a dec'ho astennet gant-hi he mourrou ; Lois ne goums mui ous Fanch ha Mari e deus eur gassout ar vrassa ouz Julia. Ne ouzer mui, e gnirione, penaus en em ghemeret, penaus en em drei evit beva e peoc'h gant pep-unan ; ha petra zo kauz a ghementse nemet an tamik chiffoun a c'hoari e toull ar c'houzouk hag a beg alies beteg ar goad. — Teir stal zo du-ze ispisial e pere e klevet drouk-koumsou avou-alc'h evit lakaat e fan hag e ludu eur rouantelez a bez : divinnet e peus dija, Filomen, e fell d'in koums euz ar fourn red, euz ar poull hag euz nosveziou Tina Lipik.

Pa ia ar fournier enn dro gant he gorn-boud, e veler heb dale pep koumer o tiredet gant he zoas, he amann he avalou hag he historion nevez broudet fin ha kaer. N'eus tra iskis ha diskiant ha ne ve ket selaouet piz enn ty-fourn : koums a rer euz a bep-tra, euz a bep-unan ;

ne goumer ket historion hir, rag an amzer ne bermet ket ha red eo gouzout ar c'heleier, mes na netra na den-ne vo ankounac'heat ; na presbital, na ty skol, na maner araok ma na diskaret ; eur goums lem a so lavaret divar benn an dimision market, ar c'hanedigheziou abred pe zivezad, ne viut ket ankounac'heat nag ar plac'het nag ar graghez, e danjer da vilina ho c'har, nag ar c'hanou, nag an injuriou, nag ar procezoù a vo guelet pe glevet er c'hostes-ma pe er c'hostes-ze. Da goumans e vo la-varet : « me gleo an dra-mâ, me gleo an dra-ze ; » eun all hardissoc'h a lavaro : « an dra-mâ zo digouezet, an dra-ze zo sur : » hag en eur mella ho zoas el laouer, hor c'houmerzet a rei var gount pep-unan eur guign pebret ha sallet mad, e kreis pehini e vo lakeat renou an nessa da jervichout da gonfitur pehini her rento herves gont pep-unan.

Ar poull-kanna ne dal ket guelloc'h. Pep strinkel a dleffe evessaat hebken ouz he fakad ha poania da c'hoal-c'hi he dillajou ; mæs nann, en em bemell a ra he euz kouez ar re-all ha lakad a ra he fri enn ho fakajou.

Pa vez en em blasset hag en em zastumet kement teod fall zo er vro, neuze e koumans ar jabadao ; pep-unan a lavar huella ma hell ar pez a c'hoar divar benn he-mâ, divar benn honnez ; an teodou o koueza var renou mad an nessa evit ho dispenn a ra muioc'h a drouz eghet ar golviji o koueza var al liebach ; klevet a rer ive flipadou druz lavaret an eil d'eben, ha memes farserez vil ha dizonest pere a zesk d'ar strinkellou yaouang hag ar pez a onzont dija hag ar pez ne ouzont ket c'hoas ; en eur gher, merc'hed ar poull-kanna a zo muioc'h a drouz gant-ho eghet gant ar raned er prat, eghet gant ar piket pa zigraker d'heo ho neichou ; ne reont nemet drouk-prezeghi a rei gouall skouer d'ar re yaouank.

An nosveziou e ty Dina Lipik n'int ket ken trouzus, mes gouskoude n'eus ket enn-ho neubeutoc'h a zanjer. Er poull hag enn ty-fourn eo e ves klevet ar c'heleier mes, e ty Dina eo e vez great he broses da bep-unan ; ama eo e ves guelet eul lez a itronnezet hag a c'hrac hez hag en ho c'hichen loenedigou yaouankoc'h o tiski ho m. cher d'abenn divezatoc'h ; ama pep-unan a zo barnet ha koundaounet hervez ma plij d'ar houmerzet, hag antronos vintin e vo kasset an daboulin enn dro mar deo red evid embann ar pez a dremenas deac'h d'abar-daë e ty Dina Lipik.

Hoghen, Filomen, hag ar voien d'en em zizober euz an teodou fall ? ne anavezan nemet unan : losker da grial ar gouazi hag ar c'haniket-ze ha kuntunui da hent eghis ma ne gleffes netra ; an teodou fierius ha bilimus-ze, ne da rentint na falloc'h na guelloc'h eghet na d'out dirak Doue.

An teodou brein-ze a lavaro e zont avarisius, ne roes ket da zribi da dud da dy, ne ghelennes ket mad da bostred, ne zioalles ket mad da verc'hed ; goulenn a reint da bion ec'h helli dimizi da verc'h gossa ha penaus ec'h helli ramplassi da vab hena. Mes ne res van ebet, ne ghemer ket nec'h gant ar barnerien lostennet-ze : ho

c'houmsou zo leun a avi pa velont da dieghez o prosperi hag el leac'h dont da fur hal enn da dy, da veler bet kant skouet a zo em da arbelle ; pet chidoum a zo dindan ar guele, ha pet fors vara var ar stadenn, e fallent cals guelloc'h oc'h en em occupi da spira'o c'hroutou, da skuba ho zy, da zidoulla bragheier ha lostennet ho bugale ha da gribat d'heo ho fenn..... Ne res van eta, mes a pe sonj ive da zivenn da dy dious an hevelep ampoezoun.....

O. H.

Hano ar Zient evit ar Sizun-ma.

- DILLUN, 26 Eost. — Sant Irene escop ha merzer.
DIMEURS, 27. — Sant Joseph Calazans.
DIMERC'HER, 28. — Sant Augustin, Escop ha Doctor euz an Ilis.
DIZIUN, 29. — Sant Ian dibenn-cost.
DIRGUENER, 30. — Santez Roza, Guerc'hez.
DISSADORN, 31. — Sant Remond Nonnat.
DISSUL, 1^o Guengolo. — Daouzevet sul goude Pante-cost.

An Abostol hirio :

Va breudeur, mar on euz eur fizians ker braz e Doue, eo dre Jesus-Christ on euz ar fizians-ze. Rag ac'hanomp hon unan ne domp ket guest da gaout zoken eur sonch vad ; Doue eplen eo hon rent guest a guementse.

Hen eo ive en deuz hon rentet guest eur ar garg da brezeg ar guevridiguez nevez, ne ket dre al lizeren, mes dre ar Speret-Santel. Rag al lizeren a laz, Speret Doue avad a ro ar vuez.

Rag mar doa gloriuz ar garg da publiha lizerennou kizellet var ar mean, en hevelep doare ma ne alle ket bugale Israel sellet oc'h drem Moizes kement a c'hoar pe a sclerijen a lugerne varnezhan, petra bennag ne doa ar garg-ze nemet eur garg a varo dre ma thie al lezen-ze beza distrujet ; pegument ne dle ket beza gloriussoc'h ar garg da brezeg an Aviel dre ar Speret-Santel ? Rag a lavaran, mar doa gloriuz ar garg da brezeg eul lezen hag a so bet penn abeg d'an dud da veza condaonet, ar garg da brezeg al lezen a c'hras pehini a ro ar guir zantelez a dle, ep mar, beza calz gloriussoc'h.

Eil lizer Sant Paul da gristenien Corinth. III. 4. G. M.

Eur quentel roet da beuillou tavarn. — Charles-Guil-lou, Duc a Brunswick a felle dezhan e vije miret mad ar zuliou hag ar goueliou en he stadou. Cassat a rea ar peuillou tavarn, ha dreist oll ar re en em roe d'ar ves-venti da zul. Clevet a reaz ez oa eun nebeut dioc'h kar eur barres eleac'h ma zoa eun toullad potret dibenn hag en em zestume en davarn e mare an ofis, evit eva hag ebatal. Ar veleien, an dud e carg o doa clasket ho distrei ; mes n'o doa great van evit pedennou na gourdrou-zou.

— Ah ! eme an Duc, ne reont van evit clevet den ? Nivelo.

Setu hen ar sul varlerc'h o lacat en dro dezhan var

he zillad all eur zae hir ha ledan, great gant mezer coz ha kignet, ha boulonet azalec he vruchet bete n'traon hag eur c'nos tog var he benn.

Kempennet evelse, ez a d'ar bourg ma comzet anezhan, hag e tigouez dres pa zone cloe h an oferen bred. Kerkent e vel eur vanden, eleac h mont d'an iliz, o vont d'an davarn. En ho fenn ez oa eun ever fall a zour, hag he fri ha picouzet he zaoulagad. Hema oa ar c'habiten. An Duc a leaz ive en ho zonez, hag evel ma her c'hemerent evit eun tremeniat o vont ebou, ne rejont nemet a van evit he velet. Azeza a rejont oll en dro d'an daol hag an Duc e kichen ar c'habiten pehini gouskoude en doa eun tamig disfizians euz an divroad.

Ep dale an tavarnour a zigas var an daol eun pisol pod pri leun a vin ardant. Ar c'habiten a groc'er pod gant he zaou zorn, a stag he benn oulhan, hag a euec c'houzougad vad. Neuze e ro ar pod d'an Duc en eur lavaret ; Kemer, ha cas en dro. An Duc ep guha a zao ar pod d'he c'binou, hag a ef-pe a ra neuze da elar neuze e ro ar pod d'an tosta dezhan en eur lavaret ive. Kemer, ha cas en dro ! Ar pod a lea evelse euz an eil d'egulle hag ec'h eilit eridi, ne reant ket oll neuze da zacha varnezhan. Abenn m'ep doa great eun nebeut troiou, oa savet caos ere, ha ne ket komzou devot eo a ioa gant ar ganfardet-ze. Dreist oll pa zomas euec h Santous, en em lakejont da c'halleget a euec ar religion, ar veleien ha kement a ziskuez beza christenien.

An Duc en doa gouzanvet ho goal komzou bete neuze. Neuze avad e sae en he za, hag e tiram en eun taol di-var he dro ar goz sae a ioa var he zillad, hag e tiskuez dezho he viscamant a zug anavezet gant an oll. Hag ep chom da varc'hata e ro a nerz he vreo-h en javedad d'ar c'habiten en eur lavaret ive. Kemer, ha cas en dro !

An oll beuillou tavarn a voa chomet bale h ho guinou ha mantret. Ha pa vije coezet ar gurun en ho zonez ne vijent ket bet nec'hetoc'h : n'o divije ket crenet muioc'h. Ar c'habiten a ioa chomet ker sebezet hag ar re all, ha ne gase ket ar javedad en dro ; mes an Duc a deno he gleze hag a lavar : alo ! Ar javedad en dro, ha calet ! An hini a glasco skei goustad, a danvalo dir ar c'heze-ma. — N'oa ket da arguilla, hag ar javedadou a stracle o vont en dro pemp pe c'huac'h guech dioc'hitu, ken na bluas gant an Duc lacat eana. Neuze e troaz oc'h an tavarnour a ioa eat var he zaoulin, hag e lavaras dezhan :

— Mar clevan-me e vezo bet en da di traou evelen ken me a lacai an tan enhan, hag as tevo gant kement so ebars.

Lavaret a rer n'eus ket abaque ne jomen galsmou e aketusoc'h d'an oferen bred d'ar zarnon, d'ar gouspe-rou, d'an oll ofison, eguet ar vanden canfardet-ze hag an tavarnour he unan ; hag evelse e lavar tud ar barrez :

— Mad, n'eus ket d'an Duc evit distrei crenn an dud dioc'h an droug ha planta leiz enho ! G. M.

Penauz anaout peleac'h ez euz doue en douar pe eien.

— Avechou e vez tud o clase gouzout peleac'h o tlelent toulla evit caout eun eienen, eur feunteun, eur puns,

rag bez'ez euz keriou ha n'o deuz ket a zour, da viana a dost. Bez'e caver tud ken anaoudeg var guementse, evel an Aotrou Paramel, an Aotrou Richard, pere ganteun taol lagad a lavarfe deoc'h dioc'htu e peleac'h ez eus dour ha pe guen dour ema. Hoguen evel na ell ket an oll lakat an dud goueziee-ze da zont da zellet oc'h ho douar, ez an da verca ama unan bennag euz ar mercou dre bere, ervez lavar tud coz ha desket, ec'h eller anaout peleac'h ez eus dour.

Evit gouzout peleac'h ez eus dour, eme eur scrifagner coz, hanvet Vitruv, ne deus nemet mont var ar meaz eun nebeut araog sao-heol, ha gourvez evit ma en em gavo an daoulagad da zellet a rez an douar. O sellet neuze tro var dro, mar gueler eun tu bennag eun ezennig pe evel eur yrumennig o sevel hag oc'h hija a zioc'h eul leac'h bennag, ec'h eller cridi ez eus dour en douar dindan an ezennig-ze.

Pa vez savet an heol, mar gueler eun toullad kellien bihan evel eun heol guenan o troidellat tost d'an douar hag o chom ato er memes leac'h, ec'h eller cridi ez euz eien dindan ho.

Eleac'h ma caver dalc'h mad guesclevet plafet oc'h an douar, eo eur merc ez euz ive eien eno.

Eleac'h ma sao anezho ho unan alec, guern, brouan, raoz, ilio, ez euz ive dour en douar, rag an traou-ze ne zavont nemet var an dour. Hoguen evit ma vent eur merc a eien, eo red e vent pell dioc'h al lennou, an dour sac'h ha zoken an dour red, rag mar bezont tost d'an douerier-ze ec'h ellont sevel ep ma ve eien eleac'h m'emaint.

Evit gouzout ha dour so en eul leac'h, ma ne gaver ket ar mercou-ma diaraog, ne deus nemet toulla an douar eur pemp-troatad bennag, hag araog mont larcoc'h, ober kement-ma: Lacat, var dro euz heol, e gouelet an toull, eur vassin pe eur pod kevr pe blom. Frota an diabarz euz ar pod pe euz ar vassin gant eol, hag he lacat var he c'hinou; netze stanca mad ha cloz an toul a zioc'h. Mar caver antronoz heradou dour diabarz ar pod pe ar vassin evel pa ve o'c'huazi, bezit sur ez eus dour eno.

Eleac'h ar pod pe ar vassin ma on eus comzet anezho, e c'hallfet lacat en toull gloan seac'h. Mar deus dour, ar gloan a vezo leiz a benn antronoz, hag oc'h he voeskel e tehio dour anezhan.

Bez'e c'helfet ive lacat en toull eur c'hlenzeur leun a eol ha var elum. Mar caver antronoz ne vezo ket dovet oll an eol, dreist oll ma caver gleb ar c'hleuzeur, eo eur mere anat ez eus dour eno.

Var ziribiz an terguin troet oc'h an anternoz eo e caver ar guella dour hag an eienennou crea. Rag en tu-ze ez eus muioc'h a zisheol. An heol a zizec'h an eienennou en tu dioc'h ar c'hrisciteiz, hag a ra droug zoken d'ar re ne zizec'h ket.

An eienennou crea, ar re o deuz an dour guella, iena ha iac'hussa, eo ar re a deu euz an douar, e treid ar mezeziou, etouez ar vein hag ar rec'hil. G. M.

KELEIER.

E Merouri-Scol Trevarez, e vezo examin, an tregont

a vis guengolo, evit receo daouzeg scolaer nevez, ha daou evit dere he leac'h d'ar re a vance. Ne receiver nemet bugale labourerien douar, bugale ar re so dezho an douar a labouront pe bugale merourien. Gouseonde daou a elle beza recevet ha pa na vent ket bugale labourerien douar, evit beza laket da studia ha da zeski ar jardinez. Ar scolerien-ze a dle caout da neubenta c'huezeg vloaz, ha gouzout ar pez a zesker er scoliou hanvet *écoles primaires*.

E Santez Anna Venet, eleac'h ma vez kement a dud o pardona bep bloaz, ez eus bet er bloa-ma eun dervez dreist an derveziou-all. An Amiral La Roncière Le Nourry, gant he ofiserien ha pemp cant den a vor, so bet eno o pardona. Muzic an dud a vor euz a guet Lorient a ioa eat gantho. Autrou Escop Guened he unan a ioa deut evit ho diguemeret, hag en deus lavaret an oferen dirazho. An Amiral, a leverer, en doa gwestlet mont di da bardona epad ma e bet er Mexic.

Dioc'h ma lavar eur scrifagner a Guemperle, an Aotrou Augustin, ez euz e departamant Finister 1,744,232, dervez arat, ha tost d'an anter, da lavaret eo, 545,712 dervez arat so dindan lann ha brug. Guir eo abaque m'eo merket ar chifrou-ze ez eus difountet eun tam douar bennag; hoguen nag a zour ne deus ket c'hoas da zifounta? Nag a zour ne roont netra?

Ar *Gazeten a Frans* a lavar en deus hon Tad Santel ar Pap galvet nao escop euz an Turki hag euz ar Gres ha pemp varnugent pe dregout euz ar re so e penn ar missionon e tu ar sao heol, en deuz ho galvet da Rom en discar amzer-ma, evit pourehas, abenn ar Seaed braz a zigor er bloaz a zeu, ar pez a zell oc'h an iliz euz ar penn-ze euz ar bed.

An ed so guelleat he varc'had eun nebeud e Paris; e leac'h all e chom evel er sizunvezioù araog. Ar varc'hadourien ne brenont ket, o sonjal e tiskente ar priz bre-ma goude'n eost. E pep leac'h couls lavaret, nemet er Russi, e leverer ez eo dister ar guiniz ha fall ar c'herc'h. Setu comzou *Cazeten ar Meziou*.

Ar memes *cazeten* a lavar d'al labourerien douar e tleont en hasta da c'houm'it irvin ha bouet chatal-all, ha pa ve red evit kementse lezel an dorna eun dervez bennag divezatec'h. Morse n'oa bet an douar doaret guelloc'h evit ar gounidegneziou-ze pere ne oufent ket man-cout da zavel buan, hag al labourerien ne oufent ket guelloc'h en em denna eguet o sevel hag o larda chatal. G. M.

PREZ AN EID.

KEMPER. — 17 Eost.		PONT-NABAT. — 14 Eost.	
Priz ar c'hant tur.		Priz ar c'hant tur.	
Guinis...	46 lur, 24 c.	Guinis...	46 lur, 46 c.
Segal....	42 lur, 67 c.	Segal....	41 lur, 04 c.
Eiz.....	9 lur, 50 c.	Eiz.....	9 lur, 25 c.
Ed-du....	9 lur, 24 c.	Ed-du....	11 lur, 04 c.
Kerc'h...	10 lur, 03 c.	Kerc'h....	9 lur, 00 c.
Avalou-douar	4 lur, 05 c.	Avalou-douar	4 lur, 25 c.

Ar Gerenti: AR DE KERANGAL.

Kemper, moullat gant Ar. de KERANGAL, Moullat an Escopi.

FEIZ HA BREIZ,

KELOU A BEP BRO, HA KENTELIOU VAR BEP TRA.

DIGASSET BEP SUL

Da guement Christen a goms ar brezouneec.

Eun Abonnamant d'ar Gazeten a goust:

Evit eur bloas.....	DAOU SCOUET.
Evit c'huoc'h miz.....	EUR SCOUET.
Evit tri miz.....	C'HUEC'H REAL.
Eur gazeten ebken.....	DAOU VENNEC.

Ar baecamant a dle beza great araog caout ar gazeten.

ALIOU.

Ar scrijou a ve c'hoant da lacat er gazeten a dleer da adressi oll d'an Aotrou MORVAN, Beleg-Kemper.

Ar paecamanchou a dleer da adressi d'an Aotrou MORVAN ebken. An abonnamant a guemerer e ti an Aotrou MORVAN, Librer, ru Kereon, e Kemper.

KEMPER, 31 Eost 1867.

Ma tenfet da lavaret deoc'h, lenner: «Ar feiz so eat en he zro; ar skiant pe an descadurez he distruch, ar sperejou cre, ar re a anavez an amzer dremenet a dro kein dezhi.» Ha ne zonehtac'h-hu ket dioc'h-tu ne voar ket petra lavar an nep a gomz evelse? Bez'ez eus gouseonde scrifagnerien difeiz hag a ro kentelioù en doare-ze d'ho lennerien. Gouzout avoalc'h a reont e leveront gueler, mes ar gaou eo buez ha bouet an dud-ze.

Ar feiz so eat kuit! hag e leverer an dra-ze er mare ma en deuz ar bed christen roet ar brassa merc a feiz a so bet guelet pell zo! An eskibien euz an oll broiou oc'h en em zestum e Rom; calonou an oll gristenien vad troet oc'h hon Tad Santel ar Pap, ha ne deo ket eno eun act a feiz? P'eur oa bet comzet a relijion muioc'h evit na rer hirio? P'eur oa bet guelet muioc'h a dud o trei kein d'an errol hag o tont da anaout ar virionez? P'eur o doa ar visionerien skignet an Aviel dre'r bed muioc'h evit a reont hirio? Ar feiz a ia kuit! Ia euz a galon unan bennag, marteze zoken euz eur c'harter bennag. Kementse a veler bepret. Doue evit castiza binien-nou, carteriou, ho les da vonga ar feiz en ho c'halon. Mes ive hag a dud a zihun ar feiz en ho ene! Hag a garteriou eleac'h ma cresc ar feiz, eleac'h ma zeo cals beoc'h evit na doa brema ez euz eur bloavez bennac!

Ar skiant, an descadurez, a leverer, a zistruch ar feiz? Ia, eun anter skiant, eun anter descadurez; da lavaret eo, an dud-ze marteze en em bella dioc'h ar relijion pere a gred caout cals gouezieguez, ha ne ouzont netra, n'o deus pleustret netra, n'o deus studiët netra a zevri; an dud-ze a voar avoalc'h evit comz a bep tra a dreuz hag a hed, mes ne anavezont netra nemet divar gorre. Pell so ez eus bet lavaret, ha gant guirionez: nebeut a skiant a bella an den dioc'h ar relijion, mes calz a skiant hen digas adarre dezhi. Ha piou a velomp-ni hirio o tistrei euz an errol d'an ilis-catholic? Pion nemet an dud gouezieca? Pion a velomp-ni er c'heriou braz o vont da zilaou ar

prezeguennou hag o creski goudeze an niver euz ar re a dosta oc'h ar sacramanchou? Pion nemet ar re o deus muioc'h skiant, muioc'h descadurez, muioc'h gouezieguez? E un descadurez divar fae a ell marteze petra dioc'h ar feiz ar sperejou brell ne ouzont morse petra difazi, mes morse ar sperejou a bouez, a gressa mad oc'h ar pez a zescont.

Hag evit an amzer dremenet, a pep amzer an dud gouezieca ha ne dint-hi ket bet ato tud a feiz? Ha kementse e kement bro so var an douar ha ne ket er c'harter-ma ebken.

Ar re a lavar eo eat ar feiz kuit, eunem glem, er memes amzer e saver rei a gouenchou, re a urzion menezec'h, leanezet, ez acals rei a dud d'euem lacat evelse e serc'h Doue, re a dud er breizegou-ze savet evit kelenan vugale hag ar iaouankiz, pe evit kemeret souc'h euz ar reglan. Muioc'h, emezho, a gouenchou hag a vreuizeou so hirio evit a ioa araog an dispac'h. Kementse a ell beza guir. Hoguen petra ra da guementse a dud kuitat ar bed, kuitat pep tra evit mont da zervic'h Doue pell dige, ha n'trouz? Petra ra dezho dilezel oll sacramanchou, ar vhez-ma evit mont da ren eur vuez a binien, aneonnac'heet, dianavezet, disprijet, eur vuoz a boan eleac'h marteont ober ar sacrifics anezho ho unan evit ober vad d'homessa? Ha ne deo ket ar feiz eo? Ha ne dep ket zoken abala mour ma o deus muioc'h a feiz hag a relijion evit ar re all eo en em gavont douget d'en em voestla evelse euz silvidiguez ho breudeur? Mar gueler eta kement a dud oc'h en em lacat er c'honenchou hag er breizegou, ne ket eat ar feiz kuit euz ho zouez. Ar re o deus ket a feiz n'int ket dare c'hoaz da guitat ar bed, hag ho fijadun hag evit Doue nag evit ho nessa.

Setu ama, divarbenn ar memes tra, eul lizer scrifet da rener *Feiz-ha-Breiz*.

Aotrou, MORVAN

Me ne doue nemet eur c'houeriat, hag am euz eur penn calet evel ma leverer o deuz ar vretoned. Me a

var mil den, lod var gant den, lod var hanter-kant, ha lod var zek den; evit ma varmint ar bobl e peb amzer. Mes kement affer vraz a vezo, ra he c'hasiuit d'ehoc'h, ha ne varmint ho-unan nemet ar re zisterra. Hag ar deac'h a vezo skanvoc'h evid-hoc'h, pa ho pezo roet lod anezhan da re all. Mar grit kement-se, e roet mad ar garg en deuz roet Doue d'ehoc'h, hag e viot goestl da ober ar pez a vezo gourc'hemennet d'ehoc'h gant-han, hag ann holl bobl-tud-ma a zistroio d'ar ghear e peoc'h.

O veza klevet ar c'homzou-ze, Moizes a reaz ar pez en doa he dad-kaer he aliet da ober. Hag o veza choazet etre holl vugale Israel tud stard ha kalounek, ho greaz prinsed ar bobl, lod da veza var benn mil den, lod var benn kant den, lod var benn hanter-kant den, ha lod var benn dek den. Hag e varnent ar bobl munud diouc'h ann dro mes ar pez a vije a ziessa a gassent da Voizes, ha ne varnent nemet ann traou essa. Ha Moizes a ghimidaz ouz he dad-kaer, pehini a zistroaz adarre d'he vro.

(Grit evit-se, eme Jethro, ha Doue a vezo gan-ehoc'h). Da ghenta, abalamour Doue a gar e teule pep den da ghemer kuzul digant eun den all abarz ober petra a dalvoudeghez vraz. D'ann eil, eur c'hroutadur hag a ra boloutez he dad pe he dad-kaer, a vezo benniget gant Doue. D'ann trede, eun den hag en em ro holl da afferiou ar bed, ne zomj nemeur e traou ann eternite.

D'ann divez, taolomp evez var ann doareou mad a dle da gant ar re a vez choazet da c'hoarh ar bobl; tud stard ha kalounek a renkонт beza; tud leun a zoujanz. Doue, tud ceun ha dislag diouc'h ann a e hant. Pobl kristen, pa hoc'h euz kuzulierien da henvel, pe kannaded da gas d'ar gampr, pe tud all da lakaat e karg, setu ouc'h petra hoc'h euz da zellout mar fell d'ehoc'h e ve great mad ho kevridiou, pe hoc'h afferiou. H.

BUEZ SANT VISANT FERRIER.

(PEMPET PENNAD).

Lizer skrivet gant VISANT d'he Superior.

« Daoust d'am pres-labour, e cavan c'hoaz eur pennadic amzer da scriva d'ehoc'h, ervez ma tlean hen ober. Abaoue m'oun deut euz a Romans, ez oun bet en em gavet hag en em gavan bepred etouez eur bobl hag a ziret a bep tu d'am c'blevet o prezet. Goude beza canct an oferan, e prezeguan d'ou pe teir gouech bemdez; ouспен e rarean beachi calz en evelp doare e cavan a veac'h eur pennadic amzer da ober eun diskuz pe da guemer eun tam boued. Va sermoniou a ran ato en eur vont gand va hent. Cons goude, bete gouzout, tad Superior, ne deuffe en ho spered ar souh em belle hoc'h angoeet, e teban da lezel va holl labourou a gostez, evit lavaret d'ehoc'h, sizun evit sizun, miz evit miz, kement am euz great abaoue ma n'em gavan er missionou.

« Lavaret a rin d'ehoc'h eta, tad Superior, em euz, abaoue ar vech diviza m'am euz ho conelet e Romans, breman ez-euz tri miz, baleet e pep corn euz an Dau-

phine evit prezeg an Aviel. En Dauphine, hen gouzout a ritze euz teir draonien pe izelen hanvet Luzerna, Argentea ha Vidupur: hoguen en teier draonien-ze e c'hoarh ar petra. Er c'harterou-ze ez-oa calz a dud a reiz ha digreden, mez dont a rent da glevet comzou Doue gand kement a ast, ma z'oun deut a benn d'ho distrei divar an hent fall. Setu perag, evid ho c'hrefat en ho feiz e boaz fresk hag en ho c'hreden nevez, eo bet falvezet gan-hen, mont meur a vech en ho c'hrefat. Goude, calz tud o veza deut d'am pidi, ez oun eat d'al Lombardi, e pez teac'h em euz prezeguet epad trizec miz gouech en ilizon ha gouech er c'histilli divar ar meaz. Neuze ez oun eat da Vonserrat ha da vroion-all en tu-all da venechou Alp, e pez teac'h em euz cavet calz tud troet divar ar guir greden hag a c'halver Heretiket. En eur vale dre an oll broiou-ze, em euz bet an eur-vad da velet an oll-dud o sallaou gand levenez comzou Doue. An darn-vuia euz an dud a ioa dallet gand an droc-Spered, a zo en em roet a zevri da heuil ar guir gredeu. Guir eo, grasou Doue a roe nerz d'am c'homzou en eur zont da vabuna calonou an dud keiz-ze gand ar glac'hard'hofochejou.

« Ar penn-caoz euz ar falz-credenon ma vevan dud-ze en-ho, eo var am euz gondlet va uhan, an imheud a zescadurez o deuz e kerven skianehou Doue ha lezennou an iliz. Calz tud ho deuz gouerantel d'in, ne vije gouelet er vro-man abaoue tregont-vloaz, o prezeg, nemed ar Vaudaou: an desmama-doneur vech pe diou ar bloaz da ada, etouez ar bobl ar bilim euz ho falz creden. C'heia a ran gand ar spout, pa sonjan pebez barnidiguez a gavo eun deiz e kenter Doue, ar veleien a helje dont ha ne deont ket da guentellia an dud-man. Darn euz ar veleien-ze a dremen-ho amzer divag ha disouris en ho ziez caen, ha d'ann all, ne fell d'ez-ho labourat nemed er c'heriou. Erguilz-ze eo e lezont da vont da goll, eur maread encou prenet a cous goude gand goad Jesus-Christ! Dre ma silid euz beleg caranteuz lebed da zesk d'ez-ho an hent a gas d'an env, e vontien diouziegez hag a varont sioaz en ho fec'hed. Himo muioc'h egued bliseoz, eo guirion lavaret eo puit an cost, miz lezeo rescontlan niver enz an costerrien. Pedica ran hemdez Mastran oll draou cronet da greski er vro-man an niver euz ar veleien.

« En eun draoien all, galvet Luteria, em euz cavet eun escop falz e redennet, hag a guemere ato an teac'h em raok: Eun deiz eous goude o veza en em gavet gant-han, ezomp en em lakel da gozal divar benn ar religion. Hoguen, he zaoulagad a zo dent da zigueri d'ar sclerijen, hag hirio an deiz e c'heuil pen-da ben doctrin an iliz catolic! Ne lavaran netra d'ehoc'h, tad Superior, divar benn da c'hentellion fall a oer aman d'ar vugale. T'egardet a ran Doue euz a greiz a va c'halon, da veza roet d'am c'homzou nerz avoual-lac'h evit mouga ar c'histumanson milliguet a rene dre aman. Eun all a zesco d'ehoc'h an doare m'az-

oun bet diguemereker c'harter m'azoa bet oar gnechall da guzet, muntreien Sant Per, morzer, Calz traou all burzuduz eruet dre va c'homzou, a zo bet c'hoarh vezet dre aman, mez gouell e ganton tevel var gnement-ze, ha ireula gloar da Zone, a zo falvezet gant-han tenna euz labour he servieker eun maread conversionou. Da Zone eta, ha da Zone eb-kead truga- rez ha meuleudi, evit kement vad eruet er vro-man dre va c'homzou.

(Eur pennad-all divezetoc'h).

IANNIC A VIL VICHER.

Pe kentellion var calz traou hag a ve mad da c'houde.

Kenta. Kentel
 AN DOARE DIA BREDERI EUN DEN CLAA.
 N'ho pezet ket aon d'a c'houlen digant ar midicin e penaos implija eul louzou. — Penaos kemeret eul louzou e distrounk. — Penaos prederi eun den epad ma vez o distrounk ha goude en deuz distrounk.

Euz ar pez en doa lavaret ar midicin, e c'homme-bac'hoaz daou d'ober: rei traou da zislounea, ha lacaat e gant euz d'ober fall, e rediz d'a dy Iannic.

— Penaos n'ema d'ad, e mezhan, kentre m'am e gnelas d'v-jaougi eoude eun deiz e kenter Doue, ar veleien a helje dont ha ne deont ket da guentellia an dud-man. Darn euz ar veleien-ze a dremen-ho amzer divag ha disouris en ho ziez caen, ha d'ann all, ne fell d'ez-ho labourat nemed er c'heriou. Erguilz-ze eo e lezont da vont da goll, eur maread encou prenet a cous goude gand goad Jesus-Christ! Dre ma silid euz beleg caranteuz lebed da zesk d'ez-ho an hent a gas d'an env, e vontien diouziegez hag a varont sioaz en ho fec'hed. Himo muioc'h egued bliseoz, eo guirion lavaret eo puit an cost, miz lezeo rescontlan niver enz an costerrien. Pedica ran hemdez Mastran oll draou cronet da greski er vro-man an niver euz ar veleien.

— Lavaret hen deuz eun dra bennac; hoguen, ker buhan ez e, n'em beuz ket he heuliet-mad.

— M'em hije pedet an Amrou da vont goustatoc'h da lavaret diou teir guech, ker am hije clevet mad.

— M'em boa aon d'ad ma as quere...

— Rac petra?

— D'a lacat anezhan d'a goll he amzer.

— Nan, nan, lavaret a vije, aon a poa na lavarche e oaz eun den her a sparet, euz azen, hag e peuz losket anezhan d'a vont en he dro hepp goud mad petra p'oa d'ober. Ha ma na piije cavet den d'a kelen, petra piije great? Implija fall al louzou ha laca d'a dad marteze. Te-se vije bet neuze avad eur paotr brao! Perac caout aon d'a

c'houlen? Ar vidisinet a oar evad ne ket ar holl ken desket hag a var ho micher. Eur vech all euz euz eun ken a goni mad.

— Mad mad, hag e c'houlenenn na seouda ket. Ne gredan ket e ve diez braz rei an tam leud-ze e am zad; n'enz nemet her lacaat en eul loz, hag her lounca evel ma lounker eul lozad suer.

— La, hag e lec'h d'isken en he goll, e stago holl pe'h he stago, hag evel ma ze c'hoer d'rest e c'hoarh ar vraz-ze en he c'limon epad an deiz. E-ze ho evel Meulin.

— Ma penaos ober la?

— Silaou mad; te ranno an lam bleud-se eur loden kement ha kement an eil evel he benn; te lacaou eul loden en eur verennad dour hag a vezo ar verennad dour ze d'a eua d'ha tad. Eur c'hard-heur goude, e oer an eil loden, hag eur c'hard-heur all goude an trede, be-vech evel ar vech kenta. Guelet em beuz tud hag a lounke an dra-ze en eur vech. Petra c'hoarvez? Calz muioc'h a hoan ho deuz, hag avizou, arac ma vez distrounk ar banne diveza, e vaz deut er meaz ar banne kenta; setu collet al louzou, pe da vuhana ne vije nemet hantervad. Perac, en em grevi o samma en eur vech ar peza hellec' ober he beac'h anezhan? Guelet em beuz hag a guemere an dra-ze en eur verennad vin pe zour suer en d'ad. Darn all a zestum ar bleud en eun tam bara euz, e gnet hag a lounker ar padad he he cheac'h, hag evelse, al louzou a zisken er c'hol evel eul lounker post, ab'losket blaaz fall ehot er guion. Setu a ze penaos e tleien en em gmeret bevech ma vez d'a lounca eul louzou bennac e bleud pe c'houlougou.

— Da lavaret eo e ranker ober d'ann den-claa, evel d'eur c'hroutadur biban, rei dezhan m'adigou.

— Ia, ha c'hoaz, alies al louzou en deus mil boan e tiskan. Ar guel ebten zo avoallac'h evit lacaat hinien-nou d'a euz.

— Grac'herez mad evit demezelled kear. Ha goude ma vez lounket?

— Anounec'hoet em beuz lavaret d'ad g'lee d'a dad beza var yun hag en he vele.

— Tri miz so ne ket bet savet, hag ouспен teir zizut zo n'euz ket distrounk eun draoien vouc' eunhan.

— Rest goude em an do lounker he louzou, e teui choant d'ezhan d'a zislounea; euz a rin. Ar c'hroutadur kenta avad a vez aliez peho font, pead he deuz, evel pa lavaret e tigneri an or. E sil, ma tigo e kentoc'h hag essoc'h, ro d'ha tad dour euz d'a eua, eur verennad vad hec' penn muioc'h lavaret dezhan zoken lacaat he yiz en he c'houzou. Epad ma vo o zislounea, laca eun dour var he dal, evit harpa dezhan he benn, ha gant e guile, e talc'hi eur bemyec bennac, evit diguemere ar pez a zistolo. Dalc'hi anezhan ive golet mad, ha mir m'hen deffe riou, rac pe vije euz a zislounek e c'houezer.

— Pell e ranc'o chom d'a zislounea? M'em beuz aon na zemelfe.

— Ne ket avoallac'h ober an euz, ved eo tol, tol e hoaz, epad eun hanter-heur, eun hent zoken avizou;

— Ne ket avoallac'h ober an euz, ved eo tol, tol e hoaz, epad eun hanter-heur, eun hent zoken avizou;

red eo tol d'a nebeuta teir pe heder scudellad vad a draou louz. An den claan a squis buhan, hag a lavar: avoallac'h, avoallac'h, va Doue, mervel a rancan. Ne silaouet ket anezhan; ne jommomp ket en hanter an hent, deomp d'a benn.

— Ha pa en do dislonket avoallac'h?

— Golo anezhan mad, ha losk anezhan he unan: an nebeuta tud hag an nebeuta trous en dro dezhan eo ar guella.

— Guelet em heuz hag a jomme pell d'a eugui goude beza heanet d'a zistol. Droug, evel pa lavarfen, a veze en ho c'hof hag e c'hrosmole, evel eur c'hrouadur bihan, goude ma vez heanet da ouela, a chom c'hoas pell d'a zifruca. Petra d'ober oc'h an dra-ze?

— Rei dezhan da eva dour yen, ha ma kendale'h c'hoas, laka eur palastr ad lin dezhan var he gof.

— Eun dra en deuz lavaret ar midicin d'ober ha ne rin ket.

— Petra eo?

— Ar midicin en deuz lavaret gorren ar pezh a zis-lounco.

Biscoas c'hoaz n'em boa clevet kement all: gorren traou louz evelse! Nan, nan, en teil e viut tolet.

— A penaos, Yvonnice, e fell did atao ober d'a benn da unan? ha te a voar guelloc'h evit ar midisin? Ret eo dezhan guelet ar pezh en do tolet d'ha dad; euz an dra-ze ec'h hallo guelloc'h barn he glenvet.

— Lacompe em heuz adarre eta scoet a gleiz ha deomp da eun dra all.

(Eur pennad-all divezetoc'h). Y. P.

MERZERIEU 1862.

An Ilis santel a gont dalc'h mad merzerien en eur c'horn bennag euz ar bed. Pa zoujer nebeuta e clever lavaret ez eus lazec'h ama pe ahont eur vanden gristenien bennag lakeat d'ar maro gant an dud divadez dre gassoni oc'h ar guir relijion. Ha c'hoaz aliez e vez merzeriet christenien er broiou pell ep ma clevet nemeur hano anezho. An droug spered a gaf ato an tu da boula eur rum baiant, eur rum tud gouez bennag da ober ar brezel da zervicherien an Aotrou Doue. Evelse pa velomp missionerien oc'h en em lacat en hent evit mont da gas sclerijen an Avel er broiou-ze eleac'h ne deo ket anavezet ar guir Doue, ez eo aliez evit gouzaon eno eur maro criz. Setu ar pezh so digouezet er bloas 1862 er vro a c'halver Indo-Chin, pe Cochinchin, etouez eur boblad tud anter c'houez hanvet Anamited.

Ar feiz a ioa bet prezeguet eno pell a ioa gant missionerien euz a Frans. Hoguen soudardet Frans o veza eat di e fin 1861 evit lacat eun tam urs bennag e touez tud ar vro-ze, an Anamited a damallaz ar gristenien ha dreist-oll ar vissionerien da veza galvet ar zoudardet da vont di. Evel ne allent nemeur ober droug d'ar zoudardet, e trojont ho c'hounnar oc'h ar vissionerien hag oc'h ar gristenien, hag en em lakejont d'ho distruja. Ervez eun ofiser pehini en deus guelet he unan ar pezh a lavar

hag a vercomp ama, e crogjont e kement missioner ha kement christen a eljont da gaout a hed diou pe deir rann-vro, hag ho destumjont a vandennou er prizoniou. Ne espejont na goazet na merc'hed, na coz na iaouanc; nan zoken ar yugale, c'hoas var ar vronn. An dud reuzedig-ze a voue destumet pe guentoc'h berniet e toul-lou hac'h, en noas couls lavaret, staguet daou ha daou an eil ouz eguile dre ho alzorniou, alzorn eleiz unan oc'h alzorn deou eguile. Merc'hed, goazed, bugale, tud coz, oll ho staguet evelse. Ho staga a reat gant guedigner pe tourkejou great gant eun doare ozil hag a zo creoc'h evit ar guella kerdin canab, hag a louc'he ive muioc'h ho izili.

Evel ma zea atao var araog soudardet Frans ha re Spagn, Gouarnar ar rann-vro a gasaz urs d'ar Vandarined da lacat an tan er prizoniou ha d'ho devi gant an oll gristenien a ioa enho. An urs eris hag euzus-ze a voue sevenet da guenta er prizoniou tost da Bien-Hoa, ha goudeze er prizoniou all dre ma zea var araog soudardet an Europ.

Pa laket an tan en unan euz ar prizoniou-ze, e veze killec'h en dro dezhan eur vanden soudardet, ha gantho euz ar goafou scrijus-ze euz ar C'hoichinchin a so keit an houarn anezho evel an troad. Ma claske unan bennag tec'het euz a greiz an tan, begou ar goafou hir-ze a zacle e corf an dud keiz, hag ho dalc'he da c'hrilla e kichen ho c'hompagnunet maro pe dare da verret. Eur scrij e veze clevet clemou an dud keiz, clevet mogueriou ruz ha toen o coeza varnezho, ha guelet an tan o sevel en ear e creiz an noz; rag en noz e reat ato peurliessa al lazerez-ze.

Eun dervez an ofiser en deus merket kementma, o veza gant he zoudardet var eun huelen a beleac'h o doa guelet epad an noz unan euz an tantajou-ze, a velas dioc'h ar mintin christenien euz ar vro o tont d'ho c'haout en eur stad an trista. N'oa mui tam dillad var ho vro, lod anezho a ioa c'hoas stag an eil oc'h eguile; n'o doa gallet na terri na disoulma ar guedigner laket d'ho liama. Oll e voa ho bleo devet, ho izili bronduet, ma c'hagnet, leun a c'hoad, goloet a c'houlion, eur scrij ho guelet. Eur c'hreg iaouanc a ioa devet eun tu euz a boule he c'halon, ha gant an tu all e roe da zena d'he buguel.

Ar zoudardet a guemeraz ar brassa sourei euz an dud keiz-ze; seurezet a charite n'o divije ket great guelloc'h; hoguen calz anezho a ioa re c'houllet hag a varvaz epad ma clasket ho louzaoui.

Ar vech kenta oa da gristenien evelse gallout tec'het euz an tan. Ep dalc'he voue jomp penauz oa c'hoarvezet kementse. Ar Mandarin ac'hano en doa recevet, evel ar Vandarinet all, an urs da lacat an tan er prizon ha da guilla soudardet var he dro evit miret na alje den tec'het. Hoguen gouzout a rea edo tost ar Francizien. Evelse en doa diou aoun. Ne grede ket chom ep senti oc'h an urz en doa bet; ha dioc'h an tu all en doa aoun na vije goullennet cont digantha gant ar Francizien euz an droug en divije great d'ar gristenien. Setu hen ta o lacat an tan er prizon hag o lacat soudardet tro var dro evel a ioa

lavaret dezhan: Mes pa voue erouget an tan e cassaz ar zoudardet kuit evit ma c'hele ar bruizonerien tec'het klid da viana lod anezho. Kementse a rea evit in en divije eun digarez, mar coeze etre daouarn ar Francizien, da veza espernet gantho abalamour n'oa ket bet ker eriz e kenver ar gristenien evel m'en divije gallet beza.

Pa zigouezaz ar Francizien gant ar prizon-ze, oa eur scrij guelet corfou an dud keiz, anter zevet, a beziou dindan al ludu, ar c'hefiou, ar vein; lod a ioa luduet, glaoennet, lod all coenvet ha crevet gant nerz an tan. Ar pezh a ioa c'hoaz euzusoc'h, oa guelet alzorniou an dud keiz torret, nezet, bruzunet, kement o doa great o sacha pa voa dent ar boan treac'h dezho. Cridi a rer e voue devet evelse, e daou viz, er rann-vro-ze, oupen daou vil pemp cant christen, azaleg an derveziou diveza a vis du 1861 betek anter mis guenver 1862.

Ar gristenien-ze ne vezint ket laket e reng ar verzerien, rag ne ket evit ar feiz epken eo int bet laket d'ar maro, mes ive dre gassoni oc'h ar francizien. Gouscoude o deus gouzanvet eur maro criz, hag e veritont, ep mar, e ve comzet anezho.

G. M.

(Revue de la Presse.)

Hano ar Zant evit ar Sizun-ma.

- DILLUN, 2. — Guengolo, — Sant Stefan roue Hongri.
- DIMEURS, 3. — Sant Fiacr.
- DIMERC'HER, 4. — Santez Pulcheri, Guerc'hez.
- DIZIQU, 5. — Sant Laurans Justinien.
- DIRGUENER, 6. — Sant Hiacinth.
- DISSADORN, 7. — Sant Lois roue a Frans.
- DISSUL, 8. — Trizevet Sul goude Pantecost. Guinevez ar Ver'hez Glorius Vari.

An Abostol hirio:

E Doue edon er penn kenta euz he hentchou, a viscoaz araog ma crouas netra. A bep eternite edon enha, a viscoaz araog ma voue crouet an douar. Ar mor doue n'edo ket c'hoaz, ha me a ioa dija ac'hano; an eienen-nou dour ne redent ket c'hoaz; ar menezion n'oant ket c'hoas diazezet var ho zolzennou pouner; ganet oan araog an terguin.

Doue n'en doa ket c'hoas crouet an douar, nag ar steriou, na laket ar bed stard var he aelou. Bez'edon pa astenne an envou, pa lakea eur c'hele h en dro d'an dounderion, ha pa roe dezho urs da chom eleac'h m'emaint; pa starde an oabl aziouzomp, ha pa lakea reaz an doureier; pa lakea torraoedhou en dro d'ar mor, ha pa c'houe h emenne d'an doureier ne deujent ket larcoc'h; pa ziaseze gouelet an douar.

Gantha edon o renea pep tra: bemdez e kemeren va nijadur, e kemeren va ebat dirazhan dalc'h mad. Va ebat a guemerer er bed, hag eun dudi eo evidhon beza gant bugale an dud.

Brema-ta, va bugale, silaout ac'hano: euruz ar re en em zalc'h em hentchou. Silaout va c'henteliou, bezit ur, ha na rit ket a fae varnezho. Euruz an hini am silaou,

a jom dihun ehars dor va zi, en heza houl var hezho hini am c'havo, a gavo ar vuez, hag a denno silaouez digant Doue.

Levr ar Furnez, Proverbou Salomon VIII, 22. G. M.

- An Aotrou'n Escop en deuz hanvet:
 - An Aotrou Ormel, vikel er Merzer, vikel er Gouarnas.
 - An Aotrou Janvier, nevez beleguet, vikel er Santez Martin Brest.
 - An Aotrou Lallemand, nevez beleguet, vikel er Plouzeniel.
 - An Aotrou Brignou, nevez beleguet, vikel er Has-tel-Nevez.
 - An Aotrou Pouliquen, nevez beleguet, vikel er Lamb-zellec.
 - An Aotrou Roue, nevez beleguet, vikel er Gouarn.
 - An Aotrou Moak, nevez beleguet, vikel er Gouarn.
 - An Aotrou Naveau, nevez beleguet, vikel er Henvez.
 - An Aotrou Cozic, nevez beleguet, vikel er S-Breizec.
 - An Aotrou Riou, nevez beleguet, vikel er Plouf.
 - An Aotrou Bussebaud, vikel er Huelgoat, vikel er Itron-Varia-Gannez er Brest.
 - An Aotrou Guyaden, nevez beleguet, vikel er Huelgoat.
 - An Aotrou Bourhis, nevez beleguet, vikel er Plouarzel.
 - An Aotrou Roudoulec, vikel er Plouezac, vikel er Laz.
 - An Aotrou Paul Ar Rouz, nevez beleguet, vikel er Fouillez.
 - An Aotrou Pelle, nevez beleguet, vikel er Plozevet.
 - An Aotrou Queau, nevez beleguet, vikel er Primelin.
 - An Aotrou Quegnier, nevez beleguet, vikel er Cloastr-Montronlez.
 - An Aotrou Rideller, vikel er Plozevet, vikel er Merzer.
 - An Aotrou Guedes, professor er Benodet, vikel er Forest-Fouesnant.
 - An Aotrou Gillard, professor er Kemper, kenta vikel er Ploneour-Sant-Germen.
 - An Aotrou Bot, nevez beleguet, vikel er Guilligomarc'h.
 - An Aotrou Bernard, vikel er Guilligomarc'h, vikel er Lanveoc.
 - An Aotrou Urcun, vikel er Landrevazec, vikel er Locunole.
 - An Aotrou Dreou, vikel er Primelin, vikel er Landrevazec.
- Euz a Glouerdi ar missionou diazezet bro eo diblasset da vont d'ar missionou an Aotrouez:
- Pineau, a escopti Anjer, evit Pondichery, Soudan.
 - escopti Lyon, evit ar Cochinchin, an ar saouen.
 - Bael, a escopti Rochel, evit Pondichery.
 - Joly, a escopti Bezancou, evit Cambodj.
 - Vanhee, a escopti Bann, evit Pondichery.
 - Jager, a escopti Metz, evit Saigon.
 - Benjamin, a escopti Suez, evit an Tong-King, an ar chine.
 - Evrard, a escopti Metz, evit an Japon.
 - Jubel, a escopti Anjer, evit Saigon.
 - Plessis, a escopti Anjer, evit Saigon.

Hou Tad Santel ar Pap a so boaz da vont d'ar marema euz ar bloas, da dremen eun nebeut dervezion e Castelgandolfo eleac'h ma en em blij ha ma c'hell diskiuza eun tamig dioc'h he labourou. Er bloa-ma en deus discleriet ne daje ket di. Evel ma zeuz e Rom tud clan gant ar c'hamera, ne fell ket dezhan mont euz ho zonez. Ar Pastor a fell dezhan chom gant he zenvet e keit ha ma zint taguet gant ar c'hlenvet. Ar Pap ne ra ket evel hiniennou euz ar re so e penn kerion en Itali, pere o deus lezet ho c'harg a gostez ha tee'het kuit pa o deus gullet ar c'hlenvet o cregui etouez an dud a c'houarent.

An tadou a urz Sant Fransez a ia, a leverer, da zevel eur gouent var dachen guezen ar Verc'hez, e kichen ar C'her, en Ejipt. Ar vezen-ze a greder a ioa anezhi, ha dindanhi e reaz ar Verc'hez eun ean gant ar Mabig Jesus pa zeas d'ar vro-ze o tee'het araog ar roue Herodez.

Abaone ma zeo discleriet gant hon Tad Santel ar Pap e tigorje eur Sened braz er bloaz a zeu, ar brotestanted so nec'het hag a lavar a bep seurt traou divar he benn. An Aotrou Manning, Arc'hescop Westminster a zo, a leverer, oc'h ober eur pennad scrit evit ho dinec'hi ha rei selear da anaout petra vezo ar Sened-ze hag evit petra e tleer he zigueri.

An ed n'en deus ket chenchet a briz er sizun dremenet; al loenet lard avad so kereat, eme *Gazeten ar Meziou*.

Ar gurun, a leverer, ne guez morse, pe couls lavaret morse var guez fao. Evelse eun den gouezieg hag en deuz evesseat mad oc'h kementse, a verc en doa gullet ar gurun eis guech varnuguent o coeza var guez; ha var an eis guech varnuguent-ze oa coezet nao guech var guez dero, seiz guech var guez elo, peder guech var scao grac'h, teir guech var alec, diou vech var guez kistin, eur vech var eur vezen eviac'h, ha morse var guez fao.

Goude an oll enclascou so bet great divar bennal labourou douar, ez eus meneg da lacat labourat stard hag a zevri var an hentehou vicinal. An oll a anavez ne eller ket guellaat an douarou ep caout hent eas da vont dezho.

Ar c'hlenvet var ar chatal a ra distruch goaz evit biscoaz en Holland hag e Beljic. A drugare Doue ne deu ket e Frans, mes da zicual outhan so.

En amzer-ma, a leverer, ez a pep tra var araog, bete zoken ar baourentez. Evelse e Brozaoz, ar vro a laker er penn kenta o vont var araog eo cresket an niver euz ar beorien eun tam mad er bloas tremenet. Er gnearbenn ez int cresket nao varnuguent dre gant. Etre Brozaoz ha Bro-C'hall ez eus er bloa-ma tri mil hag antercant a beorien muioe'h evit varlene.

En eul leac'h all c'hoaz ez ear var araog, er prizoniou. E prizon Sant Lazar, ez eus brema kement a dud ma zeus beac'h oc'h ho loja, ar pez a ziskuez ez a ive var

grese an niver euz ar re en em daol da ober ar vicherze pehini ne deo mad nemet pa vez peoc'h ganthi.

Ar memes Saozon, eu Indez, o deus great eul loen labour euz an elefant, pe olifant. He staga a reont oc'h an alar, hag e troont gantha bemen brassoc'h evit an irvi e leac'h all. Lacat a reont ober, na petra-ia, eler ere ha pounner dioc'h nerz al loen galloudus-ze. Daou zen a renc beza crog en eler-ze unan e pep postel, evit ho ren hag ho c'has en dro.

Lavaret a rer ez a da zeg mil an niver euz ar Vistri scol a ia d'an Exposition da Baris brema epad m'eo serret ar scoliqu.

Penauz miret da vervel gant an naoun. — E Kar Sant-Petersbourg, e Russi, eun den hag a voa bet guechall e servich an Impalaer, mes a voa brema ep carg hag ive ep bara, a deuas da gaout eur barner evit goulen beza laket er prizon. N'em euz, emezhan, tam da zibri, na gwest da c'honuit n'oun ket. Er prizon da viana e vezin lojet ha maguet.

Ne allan, eme ar barner, lacat er prizon nemet ar re o deus great eun torfet bennag, eun dra bennag a enep al lezen. Hoguen an den kez-ma n'en doa great drong ebet, hag evelse n'en doa guir ebet da gaout diguemer er prizon.

Va den eta en em dennaz ac'hano nec'het ha glac'haret. P'edo o vont er meaz euz an ti e cavaz e kichen an or eur serjant polis, hag hen dioc'htu da zaila var ar serjant polis-ze ha d'he ganna da doliou dorn hag a doliou penn. Ar gann ne badas ket pell, rag sicour a zigouezaz ep dale, ha va den a voue croguet enha ha casset en dro da gaout ar barner. Neuze e voue condouet d'ar prizon, ha setu penanz e teuz an den reuzendig a benn da gaout bara ha lojeis.

An tad X... en doa prezeguet en dez-all var an dever evit pep den pinvidig da rei an aluzen, da zicour an dud izomec. Prezeg a reas gant kement a ners, ma lakeas da vouela calz euz ar re a voa oc'h he zilaou.

Goude ar zarmon an oll a gomze euz ar pez en doa lavaret an tad.

— Evit an hini ne zigoro ket brema he galon da rei ar aluzen, a c'heller lavaret n'eo ket christen, a lavarent-hi.

Eun den ingravet, eun uzulier a voa etouez ar re all ha ne lavare guer, mes soujal a rea a zevri.

Unan bennag a c'houlennaz outhan: Petra livirit-hu euz ar brezeguen-ze?

— Ah! va Doue! Me'm eus c'hoant da vont da glasc an aluzen, rag sur oun e roi an dud brema! G. M.

PRIZ AN ED.

KEMPER. — 24 East.		PONT'NABAT. — 22 East.	
<i>Priz ar c'hant tur.</i>		<i>Priz ar c'hant tur.</i>	
Guinis....	43 lur, 25 c.	Guinis....	43 lur, 21 c.
Segal.....	42 lur, 42 c.	Segal.....	40 lur, 63 c.
Eiz.....	9 lur, 06 c.	Eiz.....	8 lur, 75 c.
Ed-du....	9 lur, 43 c.	Ed-du....	10 lur, 83 c.
Kerc'h....	9 lur, 36 c.	Kerc'h....	9 lur, 38 c.
Avalou-douar	5 lur, « c.	Avalou-douar	4 lur, 25 c.

Ar Gerant: AR. DE KERANGAL.

Kemper, moulet gant AR. DE KERANGAL, Moulet an Escopi.

FEIZ HA BREIZ,

KELOU A BEP BRO, HA KENTELIOU VAR BEP TRA,

DIGASSET BEP SUL

Da guement Christen a goms ar brezoune.

Eun Abonnamant d'ar Gazeten a goust:

Evit eur bloas.....	DAOU SCOET.
Evit c'huec'h miz.....	EUR SCOET.
Evit tri miz.....	C'HUEC'H REAL.
Eur gazeten ebken.....	DAOU VENNEC.

Ar baenamant a dle beza great araog caout ar gazeten.

KEMPER, 7 Guengolo 1867.

Ma vije morse leac'h da c'hoarzin ha da gaketal pa veler eur c'hlenvet pe eur voalen all bennag euz an Env o coeza var eur vro, eo a dra zur brema o velet ar pez a dremen en Itali o clevet ar pez a lavar ar c'hazetennou divar kenn ar ganfarted, ar botred vad so eno ha n'o deuz izom, emezho, Doue ebet, ha mar gallent, n'o defe kennebeut na roue na mestr. Selancat ha batouillat a reant evel piket born; gwest oant da vouzara tud. Hoguen setu ama unan o tont da lavaret eur goms dezho, unan ha na c'hortozent ket. Ar c'hlenvet eo, ar c'hamera; kerkent ar botred vad a deu mud evel guesclevet. Evel melfet oc'h en em denna en ho c'hroguen pe ranet o vont da voulet ho foul dour, en em zilont pephini en he dbull, ha pelloc'h guer ebet ken. Ep lavaret kenavezo da zen, ez eont, buan ha buan, pella ma c'hellont ac'hano, hag en eur vont ne gredont ket, me oar vad, sellat var ho lerc'h. Aoun o defe da velet an ancou savet ive var varc'h, o c'haloupat kel lijer hag hi. Pa vezont eat pell avoalc'h, pa gaf dezho emaint re hir dioc'h ar c'hlenvet evit ma c'helfe ho zaga, neuze epken e credont chom a za, hag e tennont eun halanad teo hag hir en eur lavaret: List-hen brema!

List-hen brema! ia, mes an dud-ze o doa calz anezho cargou, a ioa ho dever beza o lakat urz er c'hariou, er bourgadennou o deus kuitet! Cargou? Deveriou? Petra ra an dra-ze da ganfarted evelse? Hag hi a ra fors pe urz pe zizurz a vezo el lec'hiou scoet gant ar c'hlenvet? Ha pa ve dilezet an oll dud clan, ha pa varfent oll a steiou, petra ra-ze dezho gant ma chomint e buez ho unan?

Ar vuez so c'hoeg d'an oll ha dreist oll d'ar re n'o deus ket a feiz. Ha pa zonger e kementse ne dleer mui beza souezet o velet didalvoudeguez ha strafuil an dud digalon-ze. Ia, an hini ne zonzh nemet er vuez-ma, n'en deuz esperans ebet evit ar vuez da zont, a dle a dra zur clask beza euruz ama, ha chom var an douar hirra ma c'hallö. Ha var ar zonzh-ze neuze, pephini evithan he

ALIOU
Ar scrijon a ve c'hoant da lacat ar gazeten savet en da adressi oll d'an Aotrou MORVAN, Beleg e Kemper, anezho.
Ar paemanchou a dleer da adressi dian Aotrou SALAUN ebken. An abonnamant a guemerer e ti an Aotrou SALAUN, librer, ru Kereon, e Kemper.

unan, ha goaz aze d'an hini ne ello ket en em demp. An ar c'hristen ne raketevelse, pa mes ive ar hiltster en deus sonch da veza euruz er bed all. Gouzout a ra ma ro ama he vuez dre garantez evit he vruddeur, e recevo en he leac'h eur vuez hag a bado ato, gouzout a ra seul vuz a boan en devezot hiltster var an douar evit erenta servichid he nesa, seul brassoc'h he vezo an eurudet a roi Doue dezhan en Env, ha gant ar zonzh-ze ar marone ra ket aoun dezhan, rag mar teu d'her skel hen lacat kentoc'h aze da receo he recompan.

Evelse an dud aoun-ze a zo souezet o velet hon Tad Santel o ellom e Rom, d'he abalamour ma zeus tud clan enhi o velet Roue Napoli ha meur a brins christen o vont var dro an dud clan, o velet beleien, leanezet ha ne all eleac'h tee'het kuit, o vont a brez etrezeg al leac'h ma sco goassa ar c'hlenvet. Hag eur scrifagner a lavare: Gullet a ran e lod euz a guerion an Itali, evel Catan ha Campo-Franco eo tec'het kuit an dud e carg. E Campo-Franco eo bet red clasc re all da c'houarn ker, rag ar re he gouarne o doa kemeret an tec'h, o lezel ar re glan esicour hag ar re varo ep ho c'has d'an douar. Hoguen brema ez eus casset di merc'hed Sant Visant a Baul, hag e lacafen claoustre ne dec'ho ket ar re-ma kuit. Nan, rag ar re-ma o deuz esper da receo digant Doue eur vuez all eleac'h an hini a lekont var var o vont var dro an dud clan.

Ar guer euz an Itali a ra ar c'hamera mui distruch enhi eo Albano. An oll a ioa strafuillet eno brema ez euz eun nebeut dervezion. Ne glevet a bep tu nemet ar c'homzou-ma: *Eur belag! Eur medecin.* Tost da bevar c'hant so maro er guer-ze gant ar c'hlenvet abaone ar seiz a viz east, hag e tobez ar re all an arc'hescop, ar c'hardinal Altieri. Ar c'hardinal a jome peuryma e Rom, eleac'h m'en doa meur a garg, hag eno edo pa deuz ar c'helou dezhan edo ar c'hamera e ker benn he escopi. Kerkent e les pep tra evit redek da gaout he zenvet scoet gant ar voalen. Epad eun nebeut dervezion e voue gullet o vont nos deiz euz an eil ti d'eguil evit gullet

an dud clan, lavaret dezho eur guer mad bennag, rei dezho ho sacramanchou, mont varlerc'h ar c'honfou maro d'ar vered, hag avechou zoken sicour ho douguen. E creiz an tregas-ze a guemere e voue scoet he unan, hag e varve abenn eun nebeut heuriou. Evelse e c'heller lavaret anezhan ez eo eur pastor mad en deus roet he vuez evit he zenvot. Maro-an arc'hescop a so eur c'holl braz evit kær Albano. Ar c'hardinal Altieri a voa ken estimet e Rom, ma voa ar greden e touez an dud oa hen eo a vije Pap varlerc'h Pii nao.

An arc'hescop en doa gallet gouscoude lacat urz e pepra e kear Albano, ha digas fizians e calonou an oll dud strauillet abaoe ma voa croguet ar c'hlenvet en ho zouez. Laket en doa dont euz a Rom mediciner, beleien, seurezet, evit sicour ar re a ioa araog e kear, ha miret na jomje den clan ebet dilezet. Great en doa ive lacat tiez da zervichout da hospitaliou, ha kement en doa a ioa laket gantha e servich ar re glan.

Den ebet n'en deus great muioc'h a vad eno evit zouavet ar Pap. E mare ma crogaz ar c'hlenvet, pe eun derveziou bennag araog e voa hano das gas eur vanden zouavet da Albano. Tud Albano, o clevet kementse, ne felle ket dezho gullet zouavet o vont di. Aoun o devoa na daja ar c'holera gantho. Hoguen, araog ma zejont, e crogaz ar c'hlenvet eno, ha pa zigoueschont e vouent diguemeret mad, rag izom a voa anezho. Hag e guirionez eur vad vraz o deus great. Pa nefe hi, cals corfou maro a vije chomet eb beza casset d'an douar; rag an oll a guemere an tec'h. Kerent ha mignonet zoken a zileze ho zud clan reuzedic. An oll a ioa mantret. Ar zouavet so en em laket dioc'htu, evel seurezet guenn, da vont da renta a bep seurt servich d'ar re glan; da zebelia ar re varo, ha da rei ners calon d'ar re iac'h. Evelse ive an oll a ra ho meulendi. Ma vijent bet deut di eun dervez bennag kentoc'h, e vijent bet tamallet da veza digasset ar c'hlenvet gantho; mes evel ma voa deut ar c'hlenvet en ho raog, ha ma o deus diskuezet kement a ners calon o sicour ar re glan, ne oar ket tud kear peur o deus great lit avoalc'h dezho, na diskuezet dezho avoalc'h ho anaoudeguez vad.

Ar c'hiz a zo evit lod da ober goab euz a vreudeur ar scoliou christen ha da gomz enep dezho. Ha perag? Da guenta abalamour ne dint nemet ezen, ne ouzont netra; ha penaus deski d'ar re all ar pez ne onzont ket ho unan?

D'an eil, ha pa oufent eun dra bennag, e collont ho amzer o teski ho relijion, o teski ho c'hatekis d'ar vugale a vez fiziet enho. Hoguen goude ar rebechou-ze e c'halfet kemeret evit eur burzud ar pez a velomp bep bloas. Bep bloaz e vez eun *examin* evit ar re zesket euz ar vugale bet scoliñ ken gant ar *vreudeur*, ken gant ar vistri scol all; ha bep bloas bugale ar *vreudeur* a vez treac'h da vugale ar vistri scol. Bep bloaz o deuz eun niver brassoc'h a vugale desket avoalc'h evit beza casset d'an *examin-ze*, ha dreist oll eun niver brassoc'h hag en em denn ac'hano gant henor.

Er bloa-ma ez eus casset d'an *examin* eur scolaer ha

tringuent. Ar *vreudeur* o deus casset eiz ha daouguent, hag ar vistri scol all n'o deus cavet da gas nemet trizeg. Goude an *examin-ze* eus cavet seiz ha tregont hag a ioa en em dennet gant henor, ha var ar seiz ha tregont-ze ne voa nemet pevar a vugale ar vistri scol hag a ve bet hano anezho; an tri ha tregont all a voa oll scolerien ar *vreudeur*.

Red eo-ta e c'houfe breudeur ar scoliou christen eun dra bennag, p'eo guir e c'hellont rei descadurez d'ar vugale so etre ho daouarn. Red eo-ta ne ve ket collet tre an amzer a lakeont da zeski dezho ho relijion, ho c'hatekis. Ha ne alfet ket zoken lavaret eo marteze o teski dezho anaout Doue hag ar relijion, o teski dezho anaout an den hag e zeveriou eo e tigoront ho sperejou hag ho rentont guest da zeski essoc'h ar skianchou all? Ar re n'emaint tam e poan na gant relijion na gant catekiz, a rafe vad dezho sonjal e kementse. Gullet a rafent eo marteze defot gouzout al levric bihan-ze a zesker d'ar vugale ez a calz a dud gouezieg a dreuz, e scoont ebou; rag comzou an aviel a vezo ato guir, hag an aviel a lavar deomp ez eo Jesus-Christ *guir sclerijen kement hini a deu er bed*.

Toulouz. — Eun den hag a ioa bet o vizita an ti ma saver enha ar vugaligou dall, a ioa deut ac'hano kersouezet ha ken estlamet gant ar pez en doa gullet, ma lavare: Ar gomz a so roet d'ar re vud, a leverer, dre ma zoar deut abenn da rei dezho descadurez evel d'ar re somad ho zeod; hoguen brema ec'h eller lavaret ive e roer ar gullet d'ar re zall, rag lenn a reont coulza ha guelloc'h evit ar re a vel mad. Ar vugaligou-ze a elfet cridi o deus daoulagad e penn ho biziet. Gullet em euz eno bugale pemp pe c'hoec'h vloaz o teguech, o lenn calsguelloc'h evit ar vugale euz ho oad, ha ne voa gouscoude nemet eur miziou bennag abaoe ma voant eno. Hag evit ar vugale deut da zaouzeg, trizec vloaz a lenn couls hag ar re a voar lenn guella, hag a vouie kement a vez desket en hon tiez scol. Eun dall hag a rea scol d'ar re all, en deus sonjet lacat poenchou eleac'h al lizerennou. Gant c'huec'h poent e verc an holl lizerennou, chiffrou, notennou muzig, ha kementse dioc'h an doare ma vez laket ar poenchou-ze an eil e kichen eguile.

Ar merc'hedigou dall-ze a voar griat, ober stam, broda, ha pa vez laket dezho mesc e mesc neud ha tamou mezer a bep seurt liou, e c'houzont brao dispartia eun tam glaz, eun tam ruz etc., dioc'h m'o deuzizom. Dioc'h beg ho biziet ec'h anavezont al liou. G. M.

BUEZ SANT VISANT FERRIER.

(C'HUEC'HVED PENNAD).

Lennet hon euz, eb mar ebed, gand plijadur, al lizer caer a scrivaz *Visant Ferrier* dhe superior, euz ar gear a *Genev*. Ar scrifagner *Spond*, en eur barlant euz al lizer-ze, hag euz labourou ar zant evid ar feiz, a gomz evel hen: « *Visant* a ioa eur prezeguer deut euz an Env ha

« roet d'ar bed evit sovetat an eneo: Prezeg a reaz
« rouantelez an Env e Spagn, e Frans hag en Itali; ober
« a rea calz burzudou, calz miracloù, ar pez a roe d'he
« gomzou kement a nerz, m'a-z-eo diez lavaret pet mil
« bec'her en euz distroet divar an hent fall, na pet den
« troet divar ar guir relijion evel an heretiked hag ar
« mahometaned, en euz roet da Zoue: diez e ve c'hoaz
« gouzout da bet den clan en euz roet nerz ha iec'hed.
« Ar pez a lakea he sermoniou da rei kement a frouez eo
« dre ma rene eur vuez santel braz ha dre ma roe da
« bep-unan eur skuer ar vella. Profesia a rea ive an
« amzer da zont. Eun dra hag a roe d'ez-han eun hene-
« velidighez vraz gand an Ebestel, eo ma c'helle rei da
« entent ha da glevel gand ar iez pe al langach a ouie,
« da guement den hen sellaoe, n'euz forz euz a bez rou-
« antelez e vije. An dud a vije pell euz ar gador-sermon
« pa vije o prezeg, hen c'hleve coulza hag ar re a vije
« tost. An dud eb descadurez hen sellaoe gand kement
« a blijadur evel an dud desket, ha n'euz fors pegueit e
« pade he sermoniou, ne vije morse den skuiz euz he
« sillaou. »

Euz a *Genev*, *Visant* a dremenaz e Lorrain, hag epad pell amzer, er gear a Doule, euz bet dalc'het mad d'he gador-sermon. E miz mae, euz ar bloaz 1405, e za da *Genev*, var gomz Beneat XIII. An hini a ioa e penn ar gouarnamant-ze, a roaz d'ez-han an diguemer ar guella. Etre m'edo eno, eun torfetour braz euz he vro, o veza barnet da vervel, e voue pedet *Visant* da vont da erbedi evid-han. Eaz e vije bet d'ar zant distrei ar maro divar ben an torfetour-ze en eur lavaret eur guir d'ar gouarnour; evelato n'hen greaz ket dre zoujans evid al lealdet e doa barnet an den-ze da vervel. Kement a eure, voa conforti an torfetour ha kemma an doare ma tie beza laket d'ar maro. Goude beza tremenet eur miz e *Genev*, e reaz eur bale er broiou a sco var ar mor er gouarnamant-ze, ha neuze e teu e Frans evit mont divezatoc'h d'an *Almagn*. Etre m'edo er vro-ze, ar roue euz a *Vro-Zaoz*, o veza clevet comz euz he santelez hag euz ar burzudou a rea e peb leac'h ma tremene, a gassas kementadurez d'ez-han, evid-hen pedi da dreuzi ar mor ha mont d'he rouantelez. Ar zant a zeaz en hent var an heur, ha goude beza baleet dre *Vro-Zaoz*, an *Ecos* hag an *Irland*, e teu a nevez e *Frans* hag e tremen eur pennad amzer e *Gascogn* hag e *Poitou*. Er bloaz 1407, e za d'an *Auvergn* hag e prezeg ar c'horeiz e *Clermont*. Ar gador e leac'h ma sermone, a zo bet divezatoc'h rannet etre daou dam: an anter anezhi a voue dalc'het en iliz-Catedral, han an anter all, a voue casset da gouent he urs. Er bloaz 1408 e za da *Lyon*, hag ahano e za da gaout Beneat XIII da *Avignon*, ha goude, var dro fin miz here en em denn da *Aix*. E miz kerzu, o veza deut da *Varseil*, e za var vor da *C'hrenad*, eleac'h ma voua bet lavaret d'ez-han mont da brezeg an Aviel, gand ar roue *Mahoma*, mab d'ar roue *Joseph*. *Visant*, dre m'en doa diaraok distroet divar an hent fall calz jusevien ha calz mahometaned, a velaz gand eul levneuz ar vrasa roue *Grenad* euz hen guervel da brezeg an Aviel en he stajou. Teir guech

e prezegaz dirag ar roue, hen sellaoe bopred gand calz a blijadur. Mez dre ma velet ar bobl-oll tost da choulten ar *visitant* ha da n'em ober christen, ar pennou liella euz ar rouantelez a iez da gaout ar roue, hag a lavarez d'ez-han e colje douetaz-braz, he gurunen, ma desje prezeg pelloc'h en he stadou a eneb crellen ar *valiantaned*. Red mad e voue eta rei an teac'h d'ar missioner zantel, a zeaz neuze da gas sclerijen ar feiz da *Valens* ha da *Catalogn*. Etre m'edo er c'harterion-ze, dre eur burzud ar brassa, e teu gant pempzeg torz-vara, da vevouspen daou vil den. D'ar bemzeg a viz gouere, e teu da *Varcelon*, da gaout *Martin*, roue *Aragon*, hen loa pedet da zont he vetec. *Carguet* e voue da rei da anabot d'ar prins-ze, maro he vab *Martin*, roue ar *Sicil*. Roue an *Aragon* o veza deut goude da zemizi, e voue *Carguet Visant* gand Beneat XIII da lavaret ofenen an eured, ar 16 a viz guengolo. Ar zant a za neuze da *Florens*, ha goude da *Valens*, er bloaz 1410. Etre m'edo eno, er bloaz da c'houzout d'ar bobl, eiz dervez araok ma c'hempaz, maro roue an *Aragon*. Ar prins-ze a varvaz an dek a viz mae, 1410. Hoguen dre n'en doa mab ebed, e voue eur gabouill ar vrasa o clask gouzout da bion e vije he zigouez pe he heritaj. *Visant* o velet kement-ze a za da *Florens* ha da galz keriou all euz an *Itali*, e leac'h m'a-z-oa pedet da vont evit prezeg an Aviel. Prezeg a ra eta epad eur maread amzer e *Piz*, e *Sienn*, e *Florens* hag e *Luk*, hag o veza erruet e kichen *Genev*, en eur gueric a sco var ribl ar ster-vraz, ec'h erru gant han eur lizer scrivet gand *Ian*, roue ar *Spagn*, evid hompedi da zont c'hoaz eur vech d'ar rouantelez-ze, e leac'h m'en doa diaraok great kement a vad dre he sermonion, he beden-nou hag ar skuer vad a roe.

BODEUR.

(Eur pennad-all divezatoc'h).

Penaoz e son g, s, w e ma skridou?

G dirag e, i, ec'hiz ma vez gu pe gh: *ghened*, *ghinou*, ec'hiz ma vez *ghened*, *ghinou*, pe *ghened*, *ghinou*. Na rit ket d'ar g son evel ar j.

S attao kaled ec'hiz e pe ss, neppred ec'hiz e: *brassa*, *mission*, ec'hiz ma vez *brassa*, *mission*, pe *brassa*, *mission*. Wevid Kerneviz ha re-all a dal gwech u, gwech o: *gwin*, *war*, ec'hiz ma vez *gwin*, *war*, evit *Sant* *Briegiz* ha re-all w a dal ou, vou: *gwin*, *war*, ec'hiz ma vez *gwin*, *vouar*.

Ar c'holera pe klénved nevez missioner.

Paól, Tomaz, Jakez ha martiny pevar amezeg a voa len em gavet, en deiz all, da ober eur gaodeadem assemblez, hag e kouezaz ar gaod war ar c'holera pe klénved nevez.

Jakez: Assal setu ar c'holera adarre er vro!

Paól: Ar c'holera, abaoe eun daou-ugent vloaz so ma 'en deuz greet he genta diskenn en on touez, ha dec'h mui a-grenn digan-com. Ober a ra vap a wechou d'en em denna peda devel, mes souden, pa zomjom an

neubenta, 'en 'em gav adarre war-n-om hag e sko ac'h-annom goaz eged biskoaz. N'euz ket pell eo bet oc'h ober he reuz e Marseil hag e keryou all euz ar Frans. Eur pennadig so e ma'en Itali : bizitet 'en deuz kalz a a geryou euz ar vro-ze ; en heur a vrema e ma e Palerm hag e ra enno eun distruj spontuz. Digouezet eo e Rom hag er c'heryou tro-war-dro hag e voall sko enno. Deuet eo ivez d'or gwelet ni Breiz-Izeliz : greet 'en deuz eun droyad e Brest ; eur pennadig so e ma e Montroulez hag er parrezyou tro-war-dro.

Jakez : Pebez klêved iskiz ha spontuz ! Me a garffe gouzout petra eo ar c'holera.

Paôl : Ar c'holera a zo eur misioner, digaset gan Doue da brezeg d'eom.

Martin : Eur misioner ha n'eo ket tener he gomzou ! Na goall brezeg a ra or misioner !

Paôl : Prezeg ara dispar : ober a ra d'an dud hezelaou, pe vezant kontant, pe na vezant ket, dihuna a ra ar feiz en ho c'halonou hag ho lakaat a ra da zistroi buhan oc'h Doue.

Martin : Pedare mouez 'en deuz ?

Paôl : He vouez ne ra ket a drouz da veza klevet gan diou-skouarn ar c'horf, mes skei a ra stard war diou-skouarn an ene, monet a ra evel eur bir beteg goueled ar galon hag e taôl enno ar spont. Da heul ar spont e ya ar c'hras, hag ar c'hras hag ar spont a labour ho-daou kevred da lakaat da zivoana ha da zavel er galon-ze ar c'heuz euz ar pec'hejou, ar glac'har da veza ofanset Doue, ar c'hoant da zistroi out-ha, ha kerkent distro ar pec'her ouz he Grouer a zo greet.

Martin : Mâ ! gouzout a ra kemmesse an doare da zermom mad.

Paôl : Ia, da zermom mad tre. Beza ez euz dre ar bed ha zoken e Breiz-Izel kalz prezegeryen vad ha ne ouzont ket sermon koulz hag ar c'holera.

N'euz ket pell eo bet e sermon e Brest, o roi da Vrestiz eun tamm mision — ezomm 'o devoa, a leverer — hag 'en deuz greet enno kalz effed : lakeet 'en deuz meur a ini da zistroi oc'h Doue.

Brema e ma o visioni e Montroulez hag er c'harter tro-war-dro, hag e ra enno adarre ar memes effedou burzuduz. Gwelit eunan euz an effedou burzuduz-se :

N'euz ket pell an Aotrou Cloarec, arc'hbeleg, person Sant-Vaze, a zeuz en he spered ober en he iliz parrez eun naved en honor da Zant Rok evid pidi ar zant braz-se da bellaat goallenn Doue euz Montroulez. Lavaret a ra d'he barresianiz dont, ar muia ma c'hellint, da gemmer perz en naved-se. He vouez a zo silaouet.

An naved a zigor war-dro eiz heur euz an noz, d'an 8 a viz eost, evid beza klozet d'ar 16 euz ar memez miz, deiz gouel sant Rok, souden an iliz a zo leun, leun tenn ; kalz a renk chomm er meaz, e toull an doryou ; hag an oll dud-ze 'en 'em zalc'h d'ercad, a bed hag a gan a greiz kalon da heul ar veleyen. Bemdez evel-se epad an naved.

Hogen, piou 'en deuz digaset an oll dud-ze a foul d'an iliz da bidi ha da gana epad nao devez ? Ar c'holera. Bis-

koaz ar brasa sermoneur n' 'en deuz leunyet iliz Sant-Vaze ; ar c'holera 'en deuz he leunyet tre hag oustenn. Hag e vize bet hi eun anter brasoc'h, ne vize bet tamm re frank evid ar bobl epad an naved-ze.

Ia, ar c'holera 'en deuz dihonet feiz an dud-ze, hag ho feiz a lavar d'ezo ez eo euz an Nev e kouez goallennou Doue war ar boblou, hag ez eo ivez an Nev a renker da bidi d'ho fellaat diouz-om.

Ar feiz, gwir eo, a zeu aliez, sivoaz ! da gousket e kalon ar Vretoned, mes d'an distera taôl euz an Nev, d'an distera gourdrouzadenn a Zoue ar feiz-se a zihun : Montroulez a zo evid-om eun testeni a gemment-se.

Tomaz : Te a lavar, Paôl, e ra ar c'holera kalz vad war an douar. Me a wel an droug a ra, ha ne welan ket ar vad a brodu. Ar pried lammet digan he bried ; an tad ; ar vamm lammet digan ho bugale...., ha te a gont kemment-se evid netra ?

Paôl : Da genta e lavarin d'it, va mignon Tomaz, penaoz an oll glêvejou all a ra ar memez tra, a lamm ar pried digan he bried, an tad, ar vamm digan ho bugale, ar paotr yaouank, ar verc'h yaouank digan ho zud.... Ar c'holera war ar poent-ze n'ed eo ket droukoc'h eged ar c'hênvejou all. Evel-se, mar fell d'it blama ar c'hênved nevez evid se, blam ivez ar re-ma, ha mar gellez lamm anezo oll euz ar bed. Mes az pezh sonj da lemmel araog an oll bec'hejou, pe a-nez e labouri en aner dalem-mel ar c'hênvejou.

Me a lavaro d'it d'an eil penaoz e welez an traou evel eur payan, pe gentoc'h evel eun den eb feiz, d. l. e. evel eun den peini ne anavez nemed ar vuhez-ma, peini ne gred ket e Doue, ne voar ket ez euz evid an den eur vuhez all, ez euz eur baradoz da c'hounid, eun ifern da zivoall diout-ha.

Ha ne ouzez-te ket, va mignon Tomaz, penaoz n'ed om krouet gan Doue ha lakeet gan-t-ha war an douar nemed evid he anaout, he garet, he zervicha ha gounid evel-se ar baradoz ?

Martin : Gwir a levez, Paôl ; mes ni ne garom nemeur sonjal e traou evel-se.

Paôl : Ia, va mignoned, gounid ar gloar hag an evursted eternal euz ar baradoz o karet Doue a greiz or c'halon hag o servicha aneza gan aked, d. l. e. o viret mad he c'hourc'hemenou ha gourc'hemenou he iliz hag o tivoall gan soursi diouz an oll bec'hejou, setu a-ze epken ar pezh or beuz da ober war an douar. An oll draou all, an oll afferyou all euz ar bed-ma, ar re vraz evel ar re vihan, n'ed int e gwiryonez nemet bugalechou, nemed miliachou e skoaz affer or zelvidigez.

Hogen, c'hwi a voar pegen diod, pegen dall ez-om : ni a lez aliez affer vraz or zelvidigez a gostez, hag 'en 'em daôl da ober epken on afferyou bihan ; ne zonzom nemeur nemed da bourvezi da ezommou ar vuhez-ma.

Martin : Netra gwirroc'h : An tamm hag al lomm, eun druillenn benag da droi en dro d'eom, hag eur c'hoaradenn war lere'h eur bomm...., setu epken ar pezh a glaskom ni.

Paôl : Ia, ni a lez aliez an Aotrou Doue eb he garet hag he zervicha, hag 'en 'em laka da ober ar c'hontrol beo euz a gemment-se, da dorri he c'hourc'hemenou, d' 'en 'em roi d'ar pec'hejou ha d'an dizurzou, da ofansi dre enno or C'hrouer ha da zervicha an diaoul.

Hogen, petra a c'hoarveffe gan-eom, mar kendalc'hfem da vont gan an hent-se ? E koueffem war or penn ebarz en ifern, netra sklerroc'h.

Martin : Mâ ! Paôl, te a zigas sonj d'in da vont da govés. Eur pennadig so n'ed on ket bet. Ke attao ; evid-on-me a zo deja konvertiset ganit.

Paôl : Ha petra raio Doue evid dihuna ar feiz en or c'halonou hag or sacha diwar an hent fall war an hent mad ? Digas d'eom sonjou mad, remorzyou a goustians, prezeg d'eom dre c'hinou he veleyen ? Mes bemdez Doue a zigas d'eom sonjou mad, ha ne daôlom ket evez out-ho ; dihuna a ra ar remorzyou e goueled er c'houstians, ha ni a boany d'ho mouga ; mouez or beleyen, n'he c'hlevom mui, ho lezel a reom da brezeg e ilizou goullou ; ha pa ho c'hlevom eur wech benag, ne gredom ket d'ho c'homzou.

Jakez : Amzao arenkom e ma an traou er giz-se. Evel-se, ar zermonyou, ar prezegenou, piou a ya hiryo d'ho zilaou er c'heryou marc'had ispisial hag e parrezyou a zo diwar ar mæz ? Eun nebeud merc'hed hag eur goaz koz benag. An dud yaouank hag ar re etre an daou oad na yeont ken war dro. A hoan ma tosteont mui ouz iliz e-bet da dappout eun tamm oferenn.

Paôl : Koulskoude, ma ne glevom ket komzou Doue aliez, ne jommo ket, dihun ar feiz en or c'halon ; kousket a rai, mervel ; ha gan eur feiz maro ne ouffem nemet kerzet gan an hent fall. Ha petra a raio Doue ? Lezel ac'hannom da gerzet bepred gan an hent fall ha da vont da goli ? Nann ; Doue a zo Tad, hag eun Tad peini a gar he vugale. Dont a ra neuze en he drugarez d'or bizita gan he voallennou — ne jomm mui gan-t-ha nemed ar voyen-ze da zihuna ar feiz en or c'halonou ha d'on lakaat da zistroi out-ha. — Ia, dont a ra d'or skoi, d'or sponta, da ober d'eom 'en 'em daôler war on daou-lin ha goulenn pardon.

Doue a ra d'eom ec'hiz ma ra eun tad mad ha fur d'he vugel, pa ne ya ket hem-ma mad ha pa ne glev ket dre gaer. Kemmer a ra gan-t-ha he fouet ; gwelloc'h a gav hen goana hag hen poanya eun tamm eged lezel aneza da gemmer plegou fall pere a noazo d'eza muioc'h eged eur skourjezadenn, d' 'en 'em roi d'ar visou pere hen kollfe evid bepred. Ia, Doue a ra evel-se d'eom-ni pec'heryen : gwelloc'h e kav or poanya eun tamm er bed-ma dre he gastizamanchou eged on lezel d' 'em goll evid an eternite. AN ERMIT.

IANNIC A VIL VICHER.

V.

AR GOADEREZET.

Penaos tapout goaderezet. — Penaos anaout ar re vad d'euz ar re fall. — Penaos ho implija. — Eur fri-

touzen ar c'hiz nevez. — Penaos ho lakaat da ober gan-

— Penaos ho distaga. — Penaos stanca ar godd.

Petra d'ober gantho goude ma zint distagout a viliz

— Neket, goaderezet, eo en deus lavaret ar mullin

did d'a lacaat da tad ?

— Eo, Yannic, neket, avoallac'h scarza d'ezhan. Ne vouzellou, ret eo c'hoaz scarza he voazied. Tad paour, n'ouzont petra d'ober evit ho laza !

— Adarre o torbilad, var chonk ar vidicinet. M'her goulenn digandez : pa vez louz an tyr petra vez gwet ?

— He scuba.

— Pa vez re a huzil ebarz en eur siminal, petra reer ?

— He scarza.

— Evelze ive, pa vez en em sastumet, roa dragu lous, a voaziou fall e diabars an den, e ranker e scuba, he scarza, ar pezh a reer o rei dezhan louzou d'her lacaat da zislounca, da vont var veaz, o toull goad, pe ofalac goaderezet. Ar goaderezet eta, elleac'h ober d'roug o rai vad d'a tad.

— Hag e pelleac'h e cavin me kement all, a voaderezet ?

— Er ster, pe e ty ar re a vez.

— Er ster ?

— Ia er ster. N'out ket bet morse e voaderessa ?

— Morse.

— Setu ama penaos e ranki ober, kemer eur voal hir ha moan ; trons da vragon ha disken er ster, ne ket e creiz ar ster, elleac'h ma red an douar, mæz er c'hor-niou tro, elleac'h ma zeuz douar maro ha lous ; eno, sco a ners d'a gorv var an douar gant d'a voal. Pa po scoet eur pemzec pe ugent tol, paouez, chom eb flach el leac'h ma vezi, hag eb dale, mar d'euz eur voaderet bennac var dro, e teui d'a bega en d'a zivesker.

— A ma ve unan bennac anezho bilimus ?

— Nan, nan, ne ket ret d'id caout aon : nag el lennou, nag er goaziou, nag er steriou, ne gaver goaderet bilimus ebet.

— M'em beus clevet lavaret, coulscoude, ez euz bet tud bilimet gant goaderezet peguet enno pa vezent e neu.

— Gueyer : ar goaderezet, n'ho deus ket a vilim.

— Nan, ec'h hellont avad beza suñet eur dra bilimus bennac ?

— A pa ho daffe, ne hellont ket tol ar bilim-ze e den ebet, na pezh ket eta aon rac goaderet ebet.

— D'a vihanna, e zeus anezho a n'int ket mad ?

— Gouir eo tri rum zo : beza zeus ag a zo mad tre ; darn all n'int ket couls, ha darn all ne dalont netra.

— Penaos ho anaout ?

— Ne ket diez : ar voaderet mad tre a zo du pe c'hlaiz, compez dindan he c'hoff ha rond divar he c'hein ; pell e chom beo er mæz an douar ; rac dal ma laker an dorn varnizhi ec'h en en sastum ; leun eo a guelc'hon duen dro dezhi he c'hik ne deo n'a boug boug, n'a calet calet.

Ar re ne dint na du na glaz, a zo rond, ha boug boug

ho c'hien'int ket mad, ar reze a hanver goaderezed marc'h: eur rum al zo c'hoaz a ne dalont ken nebeut netra, dibri a reont zoken ar re vad. Ez int d'a anaout : n'ho deuz ket a guele'hou du, ne en em zastumont ket, ne verzer ket anezho. Ne gomzan ket euz a eur rum all a varf rac dal ma vezont tennet eus an dour.

- Ha ma ne ellan ket tapout avoallac'h ?
- Kæ da dy ar marchadour ; tol evez avad pere d'a guemeret.
- Ne verzer ket a re fall en taill ?
- Nan, guelloc'h eo avad an eil evit eben.
- Me gav d'in ar re vrassa a dlee beza ar re vella ; ar re ze a dlee caout muya nerz ha suna ar muya goad.
- A gav d'id. Nan, ar re vella eo ar re grenn, birvidic ha na c'houlennont nemet pega. Ar re vihan a denn nebeutoc'h a c'hoad ; neket braz ho c'hof, ar re vraz, peurvuya, n'ho deuz ket a naon, pega fall a reont ha distaga buhan. Pa veli eur voaderez teo ha lard, na guemer ket anizhi ; ounnez peurvuya a zo leun he c'hof. Kercouls, ma peuz c'hoant d'a c'hoad a leun eo a c'hoad, peg enhi dre he lost, goask varnizhi penn-da-benn, evel ma reer var bronn eur vioc'h pa vezer oc'h he goro, hag e veli ar goad o tont dre he guinou.
- Assa Yannic, c'houi a oar traou !
- Te, a dlee gout ive brema eun dra bennac.
- Oh ia ! m'ar deus goaderezed er ster, m'em bo, ha ma rancan mont d'a brena, m'em bo re vad.

— Ne ket avoallac'h caout goaderezed mad, ret eo ho implija. Arabad eo d'id, Yvonnec, ober evel eur plac'h yaouanc am heus clevet comz anezhi. Ar midisin en doa digasset dezhi diou zousen goaderezet d'a lacaat d'he zad a oa claan evel d'a hini te. Ar midisin a sonje dezhan e ouie penaos ho implija, hag a roas ar goaderezed ep lavaret netra ; i a zonje dei e ouie ive, ha ne c'houlennas netra ken nebeut. Petra ra ? Lacaat ar billic lostennec var an taan, teuzi amann ha tol ar goaderezed en amann ; ha pa oant poaz ho ro d'a zibri d'he zad. Ar paotr coz, mar karit credi, a lipe he vourrou goude m'an doa ho debret. Nèn doa ket bet aliez eur seurt fritouzen.

- Bidennou, Yannic, bidennou !
- Ker gouir a ma her lavaran d'id.
- Ma, ne ket bet stonet va fenn er vezen bella, coulscoude ne gredan ket em bije græt evel ar plac'h yaouank-ze.
- Laka evez, sonj a peuz eur ar podad yod ad lin a poa græt d'ha tad ?
- Ia neuze, mæz brema... Evelato, Yannic, etrezomp hon daou ama, ne ouzon ket re vad penaos implija goaderezed.

(Eur pennad-all divezatoc'h). Y. P.

LIZIRI DA DUD DIVAR AR MEAZ.

(EIZVET LIZER).

Da va c'hoar Louiza.

Va c'hoar gheas,

Nann, nann, n'hem gueli ket dissul kenta er verze-

dighez-ze e pehini kals a esper ober ho fortun ; da ghenta abalamour ma vo great da zul ha ma talc'han ato mad d'an trede goure'hemen a Zoue, d'an eil abalamour ma ne vo ghellet dispaka nemet koz traou en despet d'ar pez a gaver skrivet var al liketen.

Pell zo abaoe ma za kuit euz ar c'braou an eil goude heghile ar c'hezec, ar zaout hag an eubeulien ; n'eus mui enn-hân nemet pevar pe bemp loën dizec'het, glazet ha dinerzet, gagnou pere a zalc'h plass ar re vad. Var dro an tyeghez ne joum mui nemet daou pe dri alar torret ha brevet, eur c'har hag eur char-a-ban brein, uzet ha foueltret. Er gheghin hag enn arbelliou ne veler mui nemet ridochou roghet, bassinou ha kastolorenou toullet ha kloaghet, robennou distammet, eur bern takounerez mad a veac'h d'ar revanderezet ; mes sur, ne gaffemp eno na guele passabl, na linsar a fæsoun. Jos ha Mari ne glaskent nemet ar meuleudiou, savet o doa eun tyeghez kaër enn apparans, mes an tyeghez-ze fountet var ar sabl a zo kouezet pa e deut ar glao hag an avel.

Anavezet hem heus an dud-se paour eghis Job : Jos hèn doa ughent skouet ar bloa e ty eur merour ha Mari pevarzek skouet e ty eun aotrou ; mes, en eur espern e teujont a benn da zastum eun dra bennag ha pa zimesjont ec'h heljont kemeret eur verouri vihan ; prest e kemerjont unan vrassoc'h hag erfin eun tyeghez terrubl e pehini tri vlavez eost dru a lakeas ho fenn da drei.

O velet kement a arc'hant etre ho daouarn, o velet eur blavez e tigass d'heo avoualc'h da baea eur marc'had nao bloa, e kredent e teuffe bep bloa an dour ken krên d'ar vilin. Koumans a rejont da ober dispignou foll. Enn ho zy ar ber ne heane da vont en dro ; var ho zaol eo e kavet an tamou guella hag enn ho c'hao ar guin kossa ; dre fougherez e paënt kals re ho servichourien hag ho bevent gant kik-rost ; ar zâl-vraz a ioa goarnisset ken kaër ha spuret ken flour ma vije drellet an daoulagad hag ma vijet ato e danjer da riskla ha da dappa eul lam bennak. Ouspenn, e paënt ar vicherourien heb kounta an derveziou, heb evessaat ouz al labour, hag ar varc'hadoerien heb sellet ouz na skrid, na pris. Goude e prenjont eur c'harros lughernus ; an ozac'h ne vije james er ghear, ato e vije o redet ar foariou, ar marc'hajou hag er c'honversou ; teir guech ar zizon pe ouspen, ar c'hreg a iea e kear e peleac'h e loske bep-tro sommou mad a c'hle e ty ar pastezer, ar ghemenez hag ar marc'hadour mezer pe dantelez. Bugale an Itroun, euz ar penn d'an treid, a ioa guisket eghis ar chass habil ha desket ; an neb hen dije ho guelet hen dije lavaret millionerien bihan. Gouskoude ar bloaveziou a eost fall ha treud ne zalesjont ket da zont ; red e vije bet ober kof moan ; mes allas ! kustum da gaout enn ho zy kik iar, kaffe hag a beb seurt likuriou, hon aotrouien ne fellas ket d'heo yun ha setu an traou d'ar bern, ar c'har araog ar c'hezec hag ar verzedighez embannet. Ar memes tra helfe digouezout gant meur a verour all divar dro ; rak brema ne glasker mui nemet lugherni, hag araok pell, ouspen eun tiek a deui a benn euz he stalik dre ma fell

d'heo en em ziskuez pinvidik.

Mes evit rivina eun den, va c'hoar gheas, n'eus netra guestoc'h eghet follentez ar merc'hedou enn euz amzer e pehini ne glasker nemet dilladou kaër hag e pehini follentechou ar meurs enet a bad'epad ar bloa. Ar vosenze eghis tout ar vosennou-all a deuz d'heomp euz a ghear. Ha m'o deus brema ar gheghinourezet hag ar plac'hed a gampr chadennou aour ha robennou seis ; mar diat guisket brema, e kear, ar botred marchossi eghis ar varkizet koz ; var ar meas ive, ha ne velompni ket an distera potr-saout o toughen chupennou ha chiletennou a bris ha broudet enn aour hag enn arc'hant ? Ne velompni ket an oll mitizien o toughen enn ho bruchet fleur ha rubannou ; ne velompni ket merc'hed divar ar meas devet gant an heol o toughen disklavier seis ha disseolier melen ? Ne velompni ket an oll mitizien o toughen faos-mancheier broudet var ho daouarn faoutet ha var ho diou vrec'h skarnilet ? N'ho gueles-te ket c'hoas o c'holo ho gouzouk du-pôd gant eun tam pillor dantelezet bennag hag o vont da biellat pe da c'horio ar zaout gant eur spes *krinolin* : neb a vel hirio hor merc'hed a dyeghez a lavare e deuz mez eus guiskamanchou kaër ha simpl hon tud koz ; neb a vel ar mitizien a hirio a gredfe o deus c'hoant troumpla an dud yaouank ; mes n'her graint ket, rag an oll a oar ne zoughennont dindan ar *sanfarlucho*-ze nemet ivizou toull, matreze nikun ebet ; an oll a oar penaus ar vröz ru hag al losten venn n'int ket ken ru na ken gouenn ed-a-ed evel ar riblen dosta d'an douar ; an oll a oar er fin penaus ne ket ar guiskamanchou kaër ha lughernus eo a ro ar furnez pe ar skiant.

Mes kaer o deus an dud divar ar meas redék varlerc'h guiskamanchou tud kear, n'int ket c'hoas var ar poënt d'ho zappa, rag ar re-ma ken nebeut ne joumont ket a zao, ispisial ar merc'hed : ia zur, guechall itrounezet ha dimezellet kear a ioa guisket simpl ha modest, ha brema n'ouzont mui penaus en em c'holoi ; ho robennou sac'helloc a ghemer eur plas eston ; euruzamant an henchou bras zo ledaneat hag an doriou var an tyes great frankoc'h, anez unan bennag a vije choumet a istribill ouz an drez pe a dreuz var an treujou. Ouspen, ar c'his a jench gant-ho aliessoc'h eghet bemde ; hirio e vint e gouenn, varc'hoas e glas, antronos e ru eghis soudardet : hirio e toughont bragou ha tog eghis goazet, varc'hoas matreze e toughenniut chupen ha chileten ; ne goumzont nemet euz a robennou hag euz a jalou ; bemde e renkont kaout eun tam dillad nevez bennak : rak-se an dimezellet pe baour pe binvidic ne gavont ket da zimizi, rak piou eo ar goas gouest da c'hounid arc'hant anter-kant robenn ar bloa ? An itrounezet n'int tam furroc'h ; bemde e c'houlennont arc'hant digant ho aotrou, ha ne hell mui rei ha pa vez goullou ar ialc'h e vezont guelet oc'h astenn ho mourrou hag o klask chikan ouz an ozac'h. An ozac'h e-unan a c'hoanta ober he aotrou : guelet e vez o vale dre ar ruiou eur ganen flour enn he zorn, eun tok kern-huel var he benn, eur justin var he gheïn ; guelet e vez alies er c'hafeu, o

lenn ar *journal* en eur fumi he zegalen hag en eur eva he dassat ; mar deo he hano brezounege e vo rentet gallek ; mar deo re verr an hano-ze e vo lakeat diou lizeren er goumansamant, mar deo re hir e vo distaget ar penn dious al lost ha setu hon aotrou unan euz an noblans huel. — Mes evit bea nobl e renker kaout portretjou an tadou koz ? — Mad avoualc'h, mes hon aotrou a ielo da dy eur revanderez traou koz hag eno e preno portret eur general bennak pere staghet ouz mogheriou ar zâl-vraz a joumo sebezet pa velint o deo evit nizez bihan bugale eur marc'hadour koton bennak... Mes, va c'hoar gheas perag e ian-me da furchal da dy ar re all ? Perag e lavaran-me droug an-heo, me pehini ne garan nag an dud kurius, nag an teodon fall ? Choumomp eta enn hon ty ; ha pa gavomp abeg er re all, ne reomp ket eghis-d'heo ; ne reomp ket dispignou foll evit seblantout bea pinvidik ; bevomp gant henor hag hervez hor moyen ha lakomp enn eur podig-espenn ar pezig a joumo gan-heomp d'abenn dimizi hor merc'hed ha ramplasi hor potred.... O. H.

Hano ar Zant evit ar Sizun-ma.

- DIELUN, 9 *Guengolo*. — Euz a eisvet guinvelez ar Verc'hez.
- DIMEURS, 10. — Sant Nicolas Tolantin.
- DIMERC'HER, 11. — Euz an eisvet.
- DIZIOU, 12. — Euz an eisvet.
- DIRGUENER, 13. — Euz an eisvet.
- DISSADORN, 14. — Exaltation ar Groas Santel.
- DISSUL, 15. — Pevarzevet sul goude Pantecost. Gouel an hano santel a Vari.

Abostol ar zul.

Va breudeur, baleit ervez speret Doue, ha na rit ket ar peza c'hoanta ar c'horf ; rag ioulou ar c'horf so a enep re ar speret, hag ioulou ar speret so a eneb re ar c'horf : enebourien int an eil d'eguil ; hag evelse ne rit ket ato ar peza c'hoantait. Mar d'oc'h renet gant speret Doue, al lezen n'e devezo netra da lavaret deoc'h.

Oberou ar c'hig pe ar c'horf so eas da anaout : Douguen a ra an den d'ar pec'hejou lous, d'an impurete, d'ar c'homzou ha d'ar jestou dizonest ; he lacat a ra da azeuli an idolou, da gontami he nessa ; da gaout droug, tabac, cassoni, goarisi oc'h ar re all ; da veza colerius, da gaout trouz ha dizunvantez, da goeza en herezi, d'enn rei d'an avi, bete laza, hag ive d'ar vesventi ha d'ar c'horfajou, ha torfejou all evelse am eus discleriet deoc'h divar ho fenn, hag e tisclerian c'hoaz, ar re a guez enho, rouantelez Doue ne vezo ket dezho.

Ar speret avad a laca an den da veza carantezus, jaouen, didrous, gouzanvus, dizraug, madeluz, habasc, leun a zousder hag a feiz, dereat, pur ha chast. Ar re a ve evelse, al lezen n'e deus netra da velet varnezh ; rag ar re so da Jesus-Christ o deus crucifiet ho c'horf gant he voal ioulou hag ar pec'hejou ma zeo douguet dezho. Lizer Sant Paul da gristenien Galat. V. 16. G. M.

KELBIER.

An Aotrou Baron, vikel e Spezet, so hanvet belec chapel Kernizy, e Kemper.

An Aotrou Guillerme, vikel e Guipavas, so hanvet beleg evit an dud a vor.

An Aotrou Serre, vikel e Plabennec, so hanvet vikel e Spezet.

An Aotrou Fleury, vikel e Brasparts, so hanvet vikel e Lesneven.

An Aotrou Marzin, nevez beleguet, so hanvet vikel e Brasparts.

An Aotrou Gauthier, nevez beleguet, so hanvet vikel e Plabennec.

An Aotrou Lamour, nevez beleguet, so hanvet vikel e Sant Vaze Montroulez.

An Aotrou Siliou, bet person e Plouian, so maro er sizun dremenet.

Ar chasse, evit ar chas couchant, a zigor ar pevarzeg a Vengolo, er Finister, hag evit ar chas red ar c'henta a viz here.

E Sant-Briec, ar 15 a viz here, e vezo eun assamble eleac'h ma en em zestumo an dud gouezieg euz ar vro, euz a Vreiz-Izel hag euz a vro-c'hall e Brozaoz. Eno ez eus sonch d'en em glevet var meur a dra hag a zell oc'h ar c'harter-ma, ar brezonec, histor ar vro, an aroueziou, evel mein-hir, crom-lec'hjou etc. Var ar guiziou pe ar c'hustumou, var ar pez a ve da ober evit iez ha mad ar vretonet. Ar re o dese eun tam labour bennag, eur pennad scrit bennag divar benn ar vro, pe guerziou da ziskuez, a vezo diguemeret gant ma roit ho zonch da anaout, araog ma tigoro an assamble, d'an hini so en he fenn.

An ed so kereat adarre eun dra bennag er sizun dremenet : gouscoude an amzer so caer, hag an ed a eller da guempen mad, ha guelloc'h eo e meur a leac'h evit na zonjet. An eost, eme Gazeten ar Meziou, ne deo nemeur creoc'h evit an eost varlene ; ar greun gouscoude so eun tamig guelloc'h.

Ar c'holera a ra distruch braz en Itali, dreist oll e Sicil. An oll so mantret ha strafuillet. Ar re a ell a dec'h ; mes calz euz ar re a dec'h a ia ar c'hlenvet d'ho heul hag a varf eleac'h ma vezont en em dennet.

Ar rezin, a leverer, so adarre clenvet varnezh ; hoguen e lec'hiennou ne deo mui ar c'hlenvet anavezet pell zo, mes prenvat hag a laca ar rezin da vreina hag ar guiniennou da zec'ha.

An tan goall en deus distrujet, er sizunvezioù-ma, unan euz ar c'haera ilizou euz ar bed ; iliz Catedral Franfort, en Alemagn. En noz etre ar 14 hag ar 15 a eost eo e bet an tan goall-ze.

Setu ama hanoioù tud euz ar Finister hag o deus bet metalennou pe a so bet great meneg anezho en *exposition* :

An Aotronez Heuze, Homon, Goury hag Ar Rouz, euz a Landerne, evit neud ha lian, eur vetalen aour.

An Aotronez Tessier, tad ha map, euz a Gonc-Leon, evit strillerez (e gallec *produits chimiques*) eur vetalen aour.

An Aotrou Mauduit, euz a Guemperle, evit paper, eur vetalen arc'hant.

An Aotrou Balestrie, euz a Gonkerne, evit sardinet miret, eur vetalen arc'hant.

An Aotrou Jacob, euz a Guemper, evit guiscamanchou e guis Breiz, eur vetalen arc'hant.

An Aotrou Andrieux hag he guenlodeien, euz a Vontroulez, evit paper, eur vetalen bronz.

Ar re a ra scol d'an dud a vor, e Brest, evit meur a zoare labour, eur vetalen bronz.

An Aotronez : cont Ducoedig, a Guemperle, evit an doare da zoura ha da zizoura an douarou ; Dubreuil, euz a Vrest, evit chocolat ; Loisons, euz a Vontroulez, evit eun doare kellien da baca pesket ; Paisant, euz a Bont'n Abat, evit traou great gant bezin, a so great meneg anezho gant henor.

N'eus ket pell, eur paour a c'houlenne an aluzen digant an Impalaer Maximilien, hag a lavare dezhan :

— Va breur, roit din eun dra bennag !

Ar paour-ze, credabl, en doa desket en he gatekiz ez omp oll bugalc da Zoue, ha dre-ze breudeur ha c'hoarezet.

An Impalaer ne deas ket a zroug enhan evit clevet ar paour oc'h ober he vreur anezhan. Rei a reas dezhan eun aluzennig. Mes ar paour a gavaz oa nebeut a dra an dra-ze evit eun Impalaer, hag a lavaraz :

— Scanvig eo an aluzen evit eun Impalaer !

— Kea, kea, eme Vaximilien, ma ro kement all dit pepini eus da vreudeur, e vezi ep dale pinvidicoc'h evidonme.

Eur gazeten a guer Chateaubriant a lavar n'eus ken hano dre eno nemet euz eul labourer coz hag en doa, emezhan, cavet an doare da ober aour. Scriva a reas da eur Prins evit rei da anaout dezhan he gavaden, en esper caout eur gopr bennag digantha.

Ar Prins a respontas d'ar potr coz, hag a gasas dezhan eur ialc'h c'houllou, en eur lavaret :

Pa oc'h eus cavet an doare da ober aour, ne vane deoc'h nemet eur ialc'h d'he lacat ! G. M.

PRIZ AN EID.

KEMPER. — 31 Eost.		PONT'NABAT. — 29 Eost.	
Priz ar c'hant tur.		Priz ar c'hant tur.	
Guinis.	45 lur, 34 c.	Guinis.	45 lur, 41 c.
Segal.	44 lur, 74 c.	Segal.	40 lur, 24 c.
Eiz.	8 lur, 93 c.	Eiz.	8 lur, 88 c.
Ed-du.	8 lur, 36 c.	Ed-du.	40 lur, 24 c.
Kerc'h.	9 lur, 43 c.	Kerc'h.	9 lur, 88 c.
Avalou-douar	4 lur, 80 c.	Avalou-douar	4 lur, 25 c.

Ar Gerant: AR. DE KERANGAL.

Kemper, moulet gant AR. DE KERANGAL, Moulter an Escopti.

FEIZ HA BREIZ,

KELOU A BEP BRO, HA KENTELIOU VAR BEP TRA,

DIGASSET BEP SUL

Da guement Christen a goms ar brezounee.

Eun Abonnamant d'ar Gazeten a goust :

- Evit eur bloas DAOU SCOUET.
- Evit c'huac'h miz EUR SCOUET.
- Evit tri miz C'HUEC'H REAL.
- Eur gazeten ebken DAOU VENNEG.

Ar bacamant a dle beza great araog caout ar gazeten.

ALIOU :

Ar scrijout a ve c'hoant da lacat er gazeten a dleer da adressi oll d'an Aotrou Moavan, Beleg e Kemper.

Ar pacamanchou a dleer da adressi d'an Aotrou SALAN, ebken. An abonnamant a guemerer e ti an Aotrou SALAN, librer, ru Kereon, e Kemper.

KEMPER, 14 Guengolo 1867.

Lavaret on euz, er sizun dremenet, eur guer bennag divarn benn maro ar c'hardinal Altieri, sammet gant ar c'holera divar greiz ma edo o sicour ar re glan e kar Albano. Setu ama, divarbenn ar memes cardinal, eul lizer scrifet gant Aotrou Escop Orlean da veleien ha da dud fidel he escopti.

Aotronez,

En dervezioù diveza-ma oc'h eus clevet e voa dirollet ar c'holera e Rom prest goude ma voamp ni deut ac'hano. Clevet oc'h euz ive pebez courach en deus discuezet hon Tad santel ar Pap en amzer boanys-ze. Ar beac'h euz ar skuider epad gouelioù Rom, ni on euz he zantet ; hoguen ar beac'h ze en deus pouezet dreist oll var hon Tad santel, ha petra bennag ma en deus bet en he gosni nerz avoalc'h evit he zouguen, gouscoude oa da dezhan brema eana. He bidi a reat da vont da dremep an domder diveza euz an han e Castalgandolfo. Boaz oa bet da vont di, mes eun nebeut bloavezioù zo ne dea ket abalamour d'an trubuilhon a so. He bourchaz a rea da vont en hent, mes kerkent ha ma zeo croguet ar c'holera, ar Pap en deus discleriet ne daje biken euz a Rom en eun hevelep mare, e voa dezhan rei ar skuer hag e felle dezhan beza e penn ar re a gasche sicour d'ar re glan, ha cas sicour dezho he unan, mar bije red ; hage guirionez, dindan gourc'hemen ar Pap, gouarnamant Rom e deus great kement a allet da ober a enep ar c'holera.

Hoguen epad ma vianea ar c'hlenvet e Rom dre ar zoursi a guemeret da stourm outhan, e clevot en eun taol e voa croguet en unan euz al lec'hiou iac'hussa euz an Itali, en Albano, ha kementse dre eun doare iskiz avoalc'h, dre eur bar avel. Albano so eur guerig, pemp leo dioc'h Rom, hag a so eun dudi he gulet oc'h costez eun dorguen. Ar c'holera so eur voalen bouner. Abaoue pemp bloaz ha tregont e ra distruch dre an Europ, guech ama, guech ahont, ep m'e deffe gallet oll voue-

zieguez hag oll skiant an dud dont abenn d'he bellaat. Eun dervez e voue scoet pevar den gantha e kar Albano ; an noz varlec'h e tet eur bar avel hag evel pa vije ar gortenten-ze ar vosen enhi o c'hoza var ghear en nos-ze ouспен cant a voue taguet gant ar c'hlenvet. Da vintin e voue cavet tremen antercant maro ; Araog diou vech peder heur varnuguent e voa sammet penneg ha c'huac'h ugent. Sonjil pebez strafuil a dle beza eno ! Eun niver braz a dud a guemer an tec'h a dreuz an douarou, a ia d'ar c'hoajou ha d'ar menezioù divar dro, ha zoken bete Rom ! An dud clan so dilezet, tiez so bet goulonderet, ha cavet eus bet enho, meur a zervez goude, corfou maro chomet ep ho c'has d'an douar.

Kentre ma clevas kelou euz ar voalen-ze, ar c'hardinal Altieri, Escop Albano, ne chomas ket da varc'hata. Edo e Rom eleac'h m'oa he zever beza abalamour d'he gargou. Dioc'htu ez a en hent, e clasc medisinat da vont gantha, e testum he vitizien evit goulenn digantho pere anezho a c'hoantea he heuilla. Eur mevel epken en devoe calon avoalc'h da vont gantha, hag ez eaz ep dale o cas d'he heul he aluzenner hag ar vedisinat a voa dizaoun avoalc'h evit mont da stourm oc'h ar c'hlenvet. Cas a reas gantha he destamant great araog mont. Kerkent ha ma voa digouezet, eleac'h mont d'he di, ez a dioc'htu var al feurguear vraz, hag ac'hano a ru da ru, a di da di evit gulet an dud clan. Bep t'ha bep camed e cave anezho. An oll a guemerer courach oc'h he velet, ar re glan, ar re iac'h hag ive beleien kear chomet, evel ma tlient, eleac'h m'oa izom anezho.

Daou gardinal all a ioa e Albano, pa grogaz ar c'holera, ar c'hardinal Sacconi bet Nons e Pariz hag ar c'hardinal di Pietro ; daou zen a galon ho daou. Ranna a reont kear etrezho hag ez eont euz an eil penn d'eguil anezhi a hed hag a dreuz. Etreant o velet ar c'hardinal Altieri eat ker buan da Albano, e voa savet e Rom eur prez bras da gas sicour da dud ar ghar-ze. C'hoarezet, menech, cabucinet, jesuisted a red di. An Tad santel a

gas pemp zouav ha daouguent, hag ar re-ma, a leverer, a ra eur vad burzudus. Cas a ra ive c'hoarezet a charite evit ar re glan, ha toullerien beziou evit ar re varo, rag Albano e vanke zoken tud evit ar vicher boanius-ze. Ofiserien vraz a arme ar Pap, ar jeneral Zappi, ar baron Charret, an Aotrou S. Priest, secretour ministr an arrou, a tea bemdez da Albano. Niz ar c'hardinal Altieri ha niz ar c'hardinal Patrizi en em laca da gual. Cas a rear kirri carguet euz a guement a ioa izom; beteg eur c'halvez paour, evel n'en doa ken da rei, a roaz antercant arched.

Epad tri dervez dioc'htu ar c'hardinal Altieri ne guemer ket eun ean. Rei a ra arc'hant, rei a ra louzeier, rei a ra ar zacramanchou. Guelet eo bet, dindan an heol her, e penn eun enterrant. Eun hevelep carantez a verite beza curunet dre eur maro mad.

Derc'hent he varo, eur mignon dezhan her guelaz leun a ners calon, mes torret oll gant ar skuider; bet oa var eun dro Escop, banielour, hag infirmier. Edo o scrifa en lizer d'ar Pap evit he drugarecat euz eun aluzen gaer en doa laket digas dezhan. Lavaret a reas d'he vignon : « Nag hi a so scrijuz ar voalen-ma ! Ar pez a viana va anken eo ma velan enhon hag em beleien ema speret Doue oc'h hor souten. Kentre ma'm eus clevet kelou euz ar c'hlenvet, n'em eus ket gallet miret da zont ractal etouez va denvet evit kemeret sourci anezho. Ar re a c'houarne kear a so tec'het kuit; nienn avad eus va beleien n'en deus manket d'he zever, oll int chomet ama, ha kement so bet scoet gant ar c'hlenvet o deus gallet caout ho zacramanchou. Evelse ar voalen-ma a vezo bet eun taol a drugarez; laza a ra ar c'horf, mes savetei a ra an ene. » Ar c'hardinal a gomzas goudeze euz ar zouavet vad, euz ho ners calon o vont var dro an dud clan hag o sebelia ar re varo.

An noz varlerc'h, etre an deg hag an unneg a eost, ar c'hardinal a voue scoet he unan, hag antronoz vintin o voa toc'hor. Ar c'hardinal Sacconi a ziredas var he dro, ha n'her c'huiteas mui : Etretant, ar c'hardinal Pietro a guendalc'he da vont var dro an dud clan. Ar c'helou trist-ze en em skignas buan e kear, hag a c'hla-c'haraz an oll. Ar zouavet a c'houlennaz hag a deuas da receo benediction ar C'hardinal toc'hor; beleien Albano a deuz ive var he dro. Ar c'hardinal a ioa evel ma voa bet ato, didrouz ha seven. Comz a reas dezho dinec'h euz he varo; lavaret a reas dezho n'en doa great nemet he zever, hag e varve laouen; ho alia a reas da guenderc'hel da gaout sourci euz an dud clan, ha neuze ho bennigas.

Ar mignon a ioa bet oc'h he velet an derc'hent, a deuz adarre da noz : « O va Doue ! emezhan, e pe stad her c'havis ! beac'h am boue oc'h he anaout ! » Goulen- net en doa ma vije digasset he zoue dezhan euz ar Catedral. Pa zea da gommunia e lavaras gant eur vouez toc'hor, mes caloneg ; » Va Doue, gouzout a rit ez oun eur pec'her bras; mes me a voar ez eo brassoc'h c'hoaz ho trugarez evit va fec'hejou, ha pebez gras ne roit-hu ket din brema o tigas din ar maro e creiz an derved o

poa fiziet enhon. Guir eo e scoit an denvet-ze brema, mes o tigas ar maro d'ar c'horfou, e saveteit an eonou. Ho penniguen a ran, o va Doue ! Me a erbed ouzoc'h ho vikel var an douar, va c'henvreudeur ar gardinalet, an oll eskibien, an oll glouer, ha dreist oll va beleien hag ar bopl kez-ma. Me a erbed ouzoc'h va ene, hag he laca etre ho taouarn gant carantez ha gant ar brassa fizians en ho trugarez. »

Goude ar c'homzou-ze e voue nouet. Neuze e vennigas kement hini a ioa eno, en eur rei eun ali mad bennag da bephini, ha pephini a bocas d'he zorn evit ar vech diveza. Bez'e voa neuze eun niver braz a dud var an dachen o vouela, hag unan a glefjot o lavaret : « Va Doue, dilezet oamp, hag e cassit ganeoc'h ar pastor mad-ma a voa deut var hon tro ! »

Da ziv heur goude creisdeiz e tremenaz ar C'hardinal. Setu aze ar maro didrouz ha christen en deus bet ar C'hardinal mad Altieri. Pa glefjont ar c'helou-ze, tud Albano, hag hi tec'het d'ar c'hoajou ha d'ar menezioù, ec'h ancounac'hajont ho aoun hag an danjer, hag e tistrojont buan e kear. Oll dud kear en em gavaz ep dale var an dachen vras dirag ti ar C'hardinal, ha pa zejot d'he gas d'ar bez, ar bopl a lamas da zisternia ar c'hezeg, hag a gassaz ho unan an arched d'ar vered e creiz ar c'hri, al lenv hag an hirvoud. An dud keiz ne vouient ket peur o doa roet meuleudi ha bennoziou avoalc'h d'ho Escop.

Gouscoude ar c'hlenvet a rea ato distruch. Evit derc'hel e Albano leac'h ar C'hardinal Altieri, ar Pap a zonzas cas an Aotrou'n Escop Apolloni. Hema kerkent ha ma voue lavaret dezhan, a ieaq dioc'htu en hent, hag abaoue e ra er guær-ze ar pez a rea ar C'hardinal diaraog.

Maro ar C'hardinal Altieri so eun henor, mes ive eur c'holl braz evit an Iliz. Unan oa euz ar re guenta etouez ar Gardinalet. Euz al lignez huela a Rom oa. Niz bihan oa d'ar Pap Clemant deg, hag he vam a ioa merc'h d'ar prins Xavier a Sax. Bet oa Nons e Vienn. Pa voue kemeret Rom gant ar jeneral Oudinot, oue unan euz an tri Gardinal carguet gant ar Pap da c'houarn kear ken na vije distro he unan. Brema en doa en ilis Rom ar garg huela varlerc'h hini ar Pap.... Ganet oa e Rom ar 17 a vis gouere 1805, hag evelse n'en doa nemet daou vloaz ha triugent.

Ar C'hardinal Altieri a ioa eun den seven braz, madeleuz, prest da gomz oc'h an oll, dic'hloar, hag evelato stard en he lezen. Maro eo evel m'en doa bevet. Hen eo a roaz, e 1867 coulz hag e 1862, eun diguemer ar c'haera d'an Eskibien eat da Rom. Diou vech er sizun e tigre deomp he balez, evit ma c'haljemp en em velet hag en em glevet eno, ha n'euz Escop ebet ha n'en dese dalc'het sonch pe guer mad ha pe guer caloneg hon diguemer.

En he di ive en em zestumemp evit ober eun adres d'hon Tad Santel, ha sonch am euz eur gomz a lavaras deomp hag a ziskuez pe guer fur ha pe guen eun oa he speret : « an adres, emezhan, ne dle beza enhi guer da zisplijout da zen; bez'e tle beza didroel, caloneg; eun act a garantez evit an Tad Santel. » Hen ive a c'houlennas ma vije chenchet eur guer hag a elje ober poan da eun

den; ha goudeze, pa zejomp d'he drugarecat euz an diguemer mad en doa great deomp, e lavaras adarre, o comz euz ar memes den : « pa velomp unan bennag dare da veuzi, arabat eo he vounta en dour en eur asten an dorn dezhan. »

Ar C'hardinal Altieri a garie calz ar Frans hag ar veleien a Frans. Comz a rea ar galleg difazi bras. Sonch am euz en devoa plijadur o conta e voa bet, gant he dud, e Frans o tremen meur a vloaz euz he iaouankiz.

Ne gomzin ket deoc'h, Aotronez, euz ar vadelez dispar en deus bet ar C'hardinal Altieri evidon abaoue nguent vloas so. Ar pez avad a rea kement a blijadur din, ioa guelet pebez madelez a ziscuze da veleien Orlean pa zigouezent gantha e Rom. Ar re ac'hanoc'h so bet examinet gantha e Rom var an theoloji a voar pe guen az oa tostaat outhan ha gant pebez madelez ho diguemer.

Leac'h on euz eta dreist pep unan da ziskuez hon anaoudeguez vad ha da veuli ar merzer nevez-ze euz ar garantez. N'en deus great, emezhan, nemet he zever; guir eo; mes an dever-ze ama oa rei he vuez. Hag e varo e deus diskouezet deomp eur vech c'hoaz ez eus tud en iliz hag a laca ho dever araog ho buez, ha ne deo ket c'hoaz, a drugare Doue, eat da fall en hon touez gouenn Charles Borromee nag hini Belzanz.

Perag, pa gomzan a galonou cre, ne lavarfen-ma ket eur guer euz an ners calon en deus diskouezet e Albano eur Roue reuzedig ha n'ema eno nemet en eur dremen? Roue Napl en deus guelet o coeza dindan ar voalen tri euz a dud he di, ar rouanez he vam, eur breur hag eur c'hoar dezhan, hag en deus gant he zaouarn he unan servichet pemzeg den all scoet er memez amzer en he di, hag en deus discleriet ne daje ket euz a Albano keit ha ma vije unan clan gant ar c'holera e kear.

Escop Orlean a c'houlenn, e fin he lizer, digant he veleien ha tud fidel he Escopti, pedennou evit ar C'hardinal Altieri. Goudeze e c'hourc'hemen kenderc'hel da bidi evit ar Pap, rag ar Pap en deus muioc'h evit biscoaz, izom e ve pedet evithan, rag gourdrouzet eo muioc'h evit biscoas gant an dispac'herien.

FELIX, Escop Orlean. G. M.

A drugare Doue, ervez ar c'hazetennou, ne ra mui ar c'holera kement a zistruch e kear Albano. Ar guær-ze zo bet gouscoude goal scoet, rag pa scrifet an drama, e doa collet tremen c'huec'h cant den, da lavaret eo, ouspen unan dre zeg euz a dud kear.

Gouel Sant Roch so bet celebret er bloa-ma gant eun devotion dispar, ha kementse ne ket souez, rag morse n'oa bet muioc'h a izom sicour digant ar zant-ze a enep ar c'hlenvet. E Rom ez eus great, araog ar gouel, eun navet hag a so bet heuillet gant an oll. Prezeguennou a veze bemdez, ha bras meurbet eo an niver euz ar re so touseat oc'h ar zacramanchou.

Lyon.— Setu ama eur glanvourez pareet e kichen bez person Ars en dervezion kenta a viz eost. Eur plac'h iaouang, oajet a bemp bloas varnguement, merc'h eur medecin euz a Lyon a falvezas dezhi mont da vez person Ars

da c'houlenn ar iec'hiet. Pemp bloaz a voa da sebet ar penn izela euz he c'horf, e devoa collet oll he ners hag abaoue daou vloaz da dalc'het d'ar guete. Goude ar voa bet medicinnet avoalc'h var he zro, e voue euz eleac'h ma falveze dezhi; he zad, eun tad cabuc'ha diou zemezél a deuas d'he digas. Ne reas ket ar vech ep na voasseas dezhi; ken dinerz da eat ha ken toc'hor ma credjot meur a vech ez ea da vervel en hent. Digouezet e Ars e voa ker fall ma voue poan avoalc'h he he zeleur var eur guete eleac'h ma soujerd an oll ez ea da dremen. Pa voa guelleat dezhi eun nebeut, e c'hibu lennas beza casset var mean bez ar person mad, hag e voue casset var eur gador zong. Kementse avoalc'h gant tri dervez dioc'htu hag e chometo taol herou.

Ar pevare dervez, da vintin, e voue douguet adarre d'an iliz, hag e clevez an oferen santel, mes guellon ober. Da beder heur goude creisdeiz e c'houlennas beza casset adarre var ar bez, ha goude beza bet var dro eun hent varnezhan, e c'hoanteas beza lakel var he daoulin. He voa bet daoulinet nemet eur pennadig bihan pa he guete o sevel he unan, dibelt, hag o vont eun da daoulin, eun communion, ha neuze o stouet eno evit drugarecat Doue. An'oll o devoa he guelet, hag eur c'hri a laouen digant azavaz etouez an dud pa he gueljont, eun pennad goude o tont dre douez an dud, hag o vale goustadig, mes stard ha sounn en he za, evit mont d'an d'leac'h mad. Da noz e couseas c'huec'h ar pempet dervez, euz he zad hag hi, meur a bennad bale var dro Ars, ha d'ar c'huec'hiet dervez, bez eas d'ar gear en eur c'haroc'h evel pep den iac'h. Abaoue he reched a guendalc'h mad.

An hini en deus scrifet kement-ma a voa he unan Ars, hag en deus guelet oll ar pez en deus manket. *(Eclès Fournier)*, heu Gouel **BUÉZ SANTI VASANT FERRIER.**

Visant a dremenaz ar bloaz 1441 hag ar pevar bloaz goude e korn pe korn ar Spagn, o prezeg e pep leac'h rouantelez an Env, hag oc'h ober burzudou ar re vrasa. E Toled dreist oll, e tistroaz euz Doue meur a vicher jusevien, hag e lekeaz ho zempl, galvet Sinagog, da zont da veza eun iliz catolig, gouestlet d'an Itron-Varia. E deiz m'edo oc'h oferenna en iliz-ze, Doue a roaz d'ezhan da anaout maro he c'hoar a garie kement. Goude he oferen, o veza savet er gador evit sermon, e ro anaoudeguez d'ar bopl a ioa euz he sillaou, euz ar maro-ze. E Toled e chom clanv epad c'huec'h sizun, hag evel ma n'em gav pare, ez a da gaout ar roue evit goulen digant han ma vije clasket eur merk benag, diaveaz evid anaout ar gh'istenien euz ar Jusevien hag euz ar Valometanet. Ar roue a roaz d'ezhan he c'houlenn. Eun droiad all etre m'edo o prezeg e Salamañk, e velaz cas d'ar vered euz eun den lazet. Ober a eure d'an dud a ioa o touguen ar c'hort chom azao, hag o veza, en hano Jesus-Christ, great sin ar groaz var an arched, e ro ar vuez d'an den maro. Evit derhel sonch euz ar burzud braz-ze, ar bopl a reaz

sevel eno eur goaz-vean. Deuz Salamank Visant a za da Zamora, e leac'h ma c'herruaz ive eun dra burzuduz braz. Edot o cas d'ar maro eur goaz hag eur plac'h, barnet da veza devet e beo, abalamour d'eur pec'hed braz o doa great. Visant a ioa neuze o prezeg var eun dachen vraz hervez he gustum, rag an ilizou a vije re vian evit rei diguemer da guement a deue d'hen sillaou : hoguen o velet an daou grimal-ze o tremen, e pet an dud ho c'hasse d'ar maro, d'ho digas he veteg.

Ar zant a ioa kement caret gand an dud, ma voue var an heur roet d'ez-han he c'houlouen. Casset e voue eta an daou reuzedic-ze beteg en-han ; ha Visant a c'hourc'hennennaz neuze ma vijent staguet euz he gador-sermon. Neuze en em laca epad teir heur horolach da ober eur sermon var an ifern, ha var ar poanion garo a gastizo an eneou daonet er bed-all. Diskuez a reaz d'ar bobl e pez doare e vije castizet pep pec'hed er bed-all ; hag o veza deut da parlant var ar pec'hed o doa great an daou grimal a ioa stag euz he gador-sermon, e comz gand kement a nerz, ma teu da lacat da grena kement hen sillaoue. Goude he sermon e lavarez distaga an daou torfetour evid ho c'has d'ar maro ; mes pa dostejot out-ho, ne gafjot nemed ho eskern ; ho c'hik a ioa dija devet gand eun tan ellumet gand lealded eun Doue. Euz Zamora, ar zant a zeaz da Placentia, e leac'h ma roaz ar vuez da vab an Dug euz ar gear-ze.

Caer ez oa bet ober, ne voa ket guellet dont c'hoaz abenn da c'houzout da biou rei rouantelez Aragon. En divez e voue clasket nao zên ha pedet da zont da n'em glevet evit gouzout piou da lacat da roue er vro-ze. Visant hag he vreur Bernard Ferrier, a ioa euz an nao zên-ze. An dud-ze, goude beza en em guzulliet hag en em glevet mad, a zougaz ma vije roet kurunen Aragon, da Ferdinand a Castill. Ferdinand prest goude o veza deut da Sarragos, Visant a zeaz de gaout ; ha m'en doa laket he boan evit gounit d'ez-han eur gurunen er bed-man, e reaz c'hoaz ar pez a ioa en he c'halloud evid m'en dije eun deiz eur gurunen mil gouech caeroc'h e rouantelez an Env.

Bep tro ma prezegue ar zant var ar varn-general, e lavare ez oa erru tost an deiz-braz-ze. Calz tud o clevet kement-ze, a oje ho fen, hag a lavare ne oua ket guirion he zoctrin var ar poent-ze. O velet e tislavaret ar pez a brezegue eta var ar varn, Visant a n'em laca da ober eul levr, var ar virionez-ze, ha goude beza great he levr, her c'has evit beza sellet-piz out-han, da Veneat XIII. Ar Pap-man goude beza hen lennet hag hen astennet, a deu da ziscleria n'euz el levric-ze netra nemed mad, netra a eneb ar feiz catolig. Hag e feat, ma rankfet barn kement hini o deuz lavaret eo tost deiz ar varn, e ve red en em guemer euz Jesus-Christ, eus an Esbestel, euz an Tadou-Zantel euz an iliz. Tro en doa eta Sant Visant da lavaret, en he amzer, ez oa tost deiz ar varn, pe fin ar bed, p'eo guir an deiz braz-ze a hell erruout da vloaz, er miz a zeu, varc'hoaz, hirio zoken, da lavaret eo pa blijo gand Doue. Leac'h o deuz eta ar veleien da brezeg aliez var ar varn, ha da lavaret d'ar bobl teleur evez, rag dizale e tiskenno

evid an eil guech Jesus-Christ euz an Env, evit lacat ar re varo da zont da veza beo hag evit rei da bep-unan hervez he oberou.

Sant Visant a zistroaz da Valens er bloaz 1413. Caera tra a reaz ar zant er gear-ze, voue lacat da n'em unanidou diad tud a lignez huel a ioa aboue pell amzer e brezel an eil euz eguile. Euz a Valens, ez a e miz eost da Varcelon ; hag abano e treuz ar mor evit tremen en enezen Majork. Chom a ra en enezen-ze adaleg ar c'henta a viz guengolo beteg an dri-varn'nguent a viz c'huerver euz ar bloaz dac'houde : Araok mont kuit e tistro euz Doue meur a vil Mahometan. Epad ar bloaz 1415 ne ra nemed prezeg en Aragon hag e Catalogn. O veza erruet e Perpignan, e ra eur burzud ar brassa : n'euz mar ebed eur maread tud, tremen c'huerc'h mil den, o veza eat var he lerc'h evid hen c'hlevet o prezeg, ar zant evit terri sec'hed ar bobl keiz-ze, a ra sin ar goaz var eun nebeud guin a ioa gand-han, hag ar guin-ze a zeuaz da greski en eun evelep doare, ma voue cavet peadra da rei da eva d'an oll, ha c'hoaz goude m'en doa pep-unan eved euz ar guin-ze ar pez a rea vad d'ez-han, e voue guelet ne voua diminet tam. An den santel a n'em gavaz e Perpignan, ar c'henta a viz eost, en deiz ma ioa eno eur maread tud en em zastumet evit mouga an disacord a rene en iliz catolig. Beneat XIII, an Impalaer Sigismond ha Ferdinand a n'em gavaz eno. Visant a reaz ar pez a helle evit lacat Beneat da anaout concil Constans ha da goll ar guir a grede caout var gador Sant Per, rag ma c'houlouenne peoc'h an iliz kement-ze. Ferdinand o veza deut da vervel, he vab Alphon, a bedaz Sant Visant da vent en hent evit derhel kuzuil e concil Constans.

BODEUR.

(Eur pennad-all divezatoc'h).

BREMA HA GUECHALL.

An Aotrou Person coz, hor mestr scol, a lavare guechall deomp-ni paotredou crënn, destumet en dro dezan, ha sioul, chentil tost da vad evel logod pa zantont c'houez ar c'haz : clevit eta, paotred, ha lakit an dra-ma don en ho spered, na d'it ket da ancounac'haad va c'homzou.... An Aotrou Doue eo ar mestr braz e peb leac'h, e kear coulz ha var ar meaz.... Hennez eo en d'euz great peb tra, en d'euz lakeat urz e peb tra, en d'euz merket ho hent d'an heol, d'al loar, d'ar stered, en d'euz tallet ho amzer d'an hanv, d'ar goanv, d'an deisiou hir ha d'an deisiou berr.... Hennez en d'euz cabestet ar mor evit na lamm ket re, na raio ket re a zroug, na zismantro ket re a draou.... Hennez a zalc'h var an avel, evit na c'houezo ket gant re a gounnar, na ziscaro ket re a diez, na vreo ket re a vez, re a listri.... Hennez en d'euz great an den, an aotrou evel al labourer, en d'euz lojet skiant en he benn, buez en he dreid, en he zivesker, he zivrea'h, hag he lez da vond en tu ma plij ganthan, pe a gleiz, pe a zeou, da ober evel a gar pe an droug pe ar mad, mez he bac abred pe zivezad, dioc'h ma ra, dioc'h ma vev.... An

dud, paotred, n'int ket cabestet gant Doue evel ar mor, an avel.... Ne d'eont ket en dro evel an heol, al loar, na zoken evel an anevaled, ar zaout, an denved, ar c'hezec. An dud a oar, a dle gouzoud petra reont, hag a gavo dioc'h ho oberou.... An dud ho d'euz ho lezennou, lezennou great evitho gant ho C'hrouer, lezennou a dleont da heulia, mar c'hoantaont ober ho mad, lezennou a hellont da stlapa dreist ho fenn, a dre ho c'hein dioc'h ma vezo ho ioul.... Hogen, paotred, taolit evez piz oc'h an dra-ma : sul muioc'h e raio an dud fae var lezennou an aotrou Doue, sul francoc'h e ranko an dud ober ho fenn ho unan, ho fenn fall, sul muioc'h ive ha sul kentoc'h e couezint er boan.... Lezennou an Aotrou Doue, paotred, a zo ec'hiz mogerion savet a bep tu d'an hent hon euz da ober var an douar, a zo mogerion n'hor lezont ket da c'haloupad re an oll dioc'h hor faltazi, mez a vir ouzomp da derri hon divesker, hor gouzoug, d'en em laza e toullou don.... da goueza e lonk an ifern.... Ne ket red coueza eno, paotred ; rak ac'hano n'en em zaver ket, ne zistroer ket.... c'houi gleo ? Dre ma'z ear a enep lezennou an Aotrou Doue, paotred, eleac'h beva guelloc'h, easoc'h var an douar, diesoc'h eo en em gaver, a zeiz da zeiz.... oc'h en em zaoni, o kemered hent an ifern, e teuer stank ha stank da veza tud a vizer, guir verzerien var an douar.... Evelse, paotred, mar fell deoc'h caoud chans, plijadur en dra' vevot, sentit oc'h ho tud, grit lavar ho tadou hag ho mammou, na glaskit ket beza mistri keit ha ma'z oc'h a boan moused, na douchit ket oc'h ar vaz en d'euz lakeat an Aotrou Doue etre daouarn ho tadou, ho mammou, ho mistri.... Ar vaz-ze a zo re bounner evit ho taouarn, paotred.... Ar vaz-ze a zeuio atao re abred en ho taouarn.... Ar vaz-ze a goust, a zo tra c'houero he mania.... Senti, ha senti bepred, ha senti var ar ger, hep argila, hep c'houeza ho mourrou.... an dra-ze eo ho tever hag ho para guin....

Diouallit mad, paotred, *hum ; hum*, na gleffën-me gant ho tud nag hirio, na vare'hoaz, n'ouzoc'h ket senti, ne garit ket senti, e scrabit ho penn abarz senti, ne zenit nemet en despet deoc'h, ha dreist oll ho pe c'hoant da drei, da blega dioc'h ho toare ho tadou, ho mammou, ar re goz en ho kear, pe e cousto d'ho ler, d'ho tiscouarn.... Penaoz' ta *saoudien*. Paotred, bugale, mec'hieien oc'h ober al lezen en ho zi, an dra-ze a zo eur gont?... An dra-ze petra eo nemet staga kezek oc'h lost ar c'har ? Penaoz ober hent gant an hevelep jaoiou?... Eur veach c'hoaz, paotred, chommit en ho liorzik, ken na zeuio an Aotrou Doue da lavared deoc'h : lammit brema dreist ar c'hleuz er park braz a zo aze e kichen.... ken na zeuio an ankou da loja ho tud e corn pe gorn euz ar vered.... Neuze c'houi a hello mond en alar.... Neuze c'houi a hello ober ar c'honideguez.... Neuze c'houi a hello caoud ar ialc'h en ho codel, en hoc'h armel.... Neuze c'houi a hello guerza, hag a ranko paea.... Neuze c'houi a ranko bale memez en noz, eleac'h e chomm keit ha keit all da ober ho cousk mintin en ho kuele, da lipad ho tijuni en ho kuele....

Ha ni, potredou, kenteliet ken eun ha ket fraaz, ni aze zelaoue hor pastor coz, ni hon euz dalc'h eusomp euz an gomzou hor pastor coz, ni a zeu c'hoaz an daou fenn hon daoulagad pa zontomp, goude keit amzer, pevad lavare, petra brezegue deomp hor pastor carantoz, ni hon tad, trugarezuz, da rust ma'z oa he varo, ni, an veac'h anomp a zo chomet beo, ni garje eved hini o'hoaz d' a c'hinou hor pastor diflat ar pez a gont deomp guechall all d'he c'hiz, en he zoare, hag en d'euz great deomp kement a vad, en d'euz pelleat, dibuzomp nousped ar sottoni, nousped ar follentez.... Oh ! nan, ne keit eo hon euz great fall o selaou mouez, kentelieu hor pastor d' hor mestr scol.... Ne velomp ket e ve euzoc'h anomp o gale a ra brema ken abred ha ket stank ho fenn ho unan, a lamm ken abred ar vaz euz a zaoni ho zud, eget ar yugale guechall a iea kempoull daouarn er an hent, d'ar park, d'al labour a ziscouez e deuz biz ho zad pe ho mam, pe lagad eun contr'coz, eun toud eb daoubleget gant an oad, ar boan.

Ah ! ia, brema eo ez euz bugale hag a oar abred, dizona tad ha mam, ho c'has d'ho glud araok mare ar ger, ober gantho c'hoar d'ho lu, ha planta samm var ho c'hein, evit mond ho unan var ho lerc'h goull, caer, en eur zutal, en eur c'houtellad evel ma c'herne oc'h heul he golcon ! Brema desket ma vez, goude peb c'houec'h, seiz vloaz tremenet er scol, brez lenneun, tam gallek, drailla eun tam gallek, a vez heaz ha selear, tost da vad ec'hiz Turk, ec'hiz Saoz, e lizer eza a gostez, ar pevare gourc'henn a Zoue.

Da dad, da vam a eno.

Evit pell amzer ma vev.

Ha buhan aoualc'h en he leac'h e ve lakeat ar gourc'henn all-ma ; eun tammik dishevel.

Ne ri nep man a vam, a dad.

Ma teuio d'id tres eur paotr mad.

Hogen, mar ho d'euz an tadou hag ar mammou kement da ober, da c'houzaon gant ho bugale, petra da lavared euz ar vistri, euz an dud, tieien, labourerien, micherourien, a rank kemered re all d'ho zecour, digeri ho zi da blac'hed, da vevellou ? Ama c'hoaz nag a gemm etre an amzer a zo, hag an amzer a zo bet. Nag a dud, marvet aboue antecant, triugent vloaz, a ve sebezet ha sebezet da vervel a nevez, mar guellent o listri var gorre an douar, pe seurt buez, pe seurt doare a zo brema dre ar bed gant ar re a c'halvomp sevirerien.

Var ar meaz guechall, evel o kear, pe ger stank oa ar mevellou, ar plac'hed a veze hevel caer oc'h bugale a di ; a respete mestr ha mestrez ec'hiz tad ha mam, a zelaoue ho c'homzou hag a zente out ho gant ar brassa plijadur ; a iea hag a zeue ken hardiz ha tra e ti, ho mistri, hep aon nemeur da glevet na trouz, na scandal, kement e claskent mad ho mistri, ken douget oant evit ho mistri ; a veve keit ha keit all gant ar memez mistri, hep sonjal d'ho c'huitaad euz an eil bloaz digilet, hep beza dalc'h mad o c'houlenn cressk en ho c'hoanant. A gave guell touch nebeutoc'h a arc'hant da fin ar bloaz, ha beza dizanjer dindan diouaskel eur mestr honest.

eur vestrez kristen! En amzer-ze stank ha stank eur mevel, eat da baotr saoud en eun tiegez, eur verouri, a zeue a nebeudou da vevel labour, goudeze da vevel braz, a gave he renk e kichen mest an ti, ha ne glaske he chans e leac'h all nemet pa veze deut he vare da vond er bed, da gemered maouez evit ober tiegez en he gont he unan, pa gave da rei dez an dorn eur verc'h a di, merc'h eun ti honest hag en eaz, abalamour d'he vrud a labourer c'hoantek hag a vir gristen. A bet ar verc'h, bet da genta plac'h bihan, plac'h cavel, bet bloavesiou o luskad bugale, o tougen bugale var he divreac'h, oc'h ho fortezad var he c'hein, deut gant an amzer da blac'h crenn, da blac'h braz, mervel ma rea ar vam, ar vestrez en ti, a gemere plas ar vestrez gant truez oc'h ar vugale a chomme var he lerc'h, a zave ar vugale-ze evel pa vijent he bugale he unan, hag a forz da entend outho, da veilla varnezo, da gared anezo, a lakea ar vugale-ze d'he c'hared he unan, d'he zelaou evel ho mam, d'he respeti evel ho mestrez!

Nag a vevelou, nag a blac'hed guechall, deuet iaouank flam, bugaleou tener en eun ti evit servicha, a dremene eno ho oll amzer betek ar gosni, a ranke chom eno da vervel, a zeue da veza ar guella, ar surra ale'houesiou euz an ti, hag a roe peb amzer d'ho mistri da vond ha da zond, da vond d'an iliz, d'ar marc'had, d'ar foar, dizoursi braz var gont ho ziegez!... Ar mevel coz, emezho, ar plac'h coz a zo er gear... Fanch a entento oc'h al loned, a gaso al labour, ar baotred en dro... Mari ne gollo ket ar guel euz ar vugale vihan... Mari a hencho ar merc'hed... Ar pred a vezo prest d'ar mare... Ar portezet a gavo he arreal... Mar bez disdreset netra, e vezo grosmol ken na vezo renket an traou... Ar vugale, euz ho c'hostez, a ve doan braz gantho ober an disterra poan na da Fanch, na da Vari... Comz ar mevel coz, ger ar plac'h coz a zo mouez an Aotrou Doue he unan... Mar bez gwelet pe Fanch, pe Vari trist ho fenn, o clask vouela, e savo caon gant an oll... Den ebed en ti n'en d'euz guir da gelenn, da scandalad evel Fanch coz, evel Mari goz... An tad, ar vam ho unan a rank selaou ar re-ze... Ha ne ra droug ebed dezo hen ober... Mez ive Fanch ha Mari, deuet coz, ne veze hano ebed gantho a bae, a goumanant e penn ar bloaz, ne c'houlennent ken nemet beza guisket ha maget, ne c'houlennent oc'hpenn nemet ar c'hras da vervel en ti, etre divreac'h ar vugale, ar vugale ho deveze gwelet o sevel, ho deveze sicouret da zével... Hag o c'headal ar maro, a labourer guella ma hellent, en tu all d'ho galloud meur a veach, daoust ma vijent pedet ha pedet da heana, da baouez...

O amzer gristen, o amzer gaer ha dudiu, e pelec'h oud-te eat? Ah! ma vije bet guechall ar c'hiz da rei prison, croasiou, metalennou d'ar zervicherien a garie ho mistri, a labourer c'houek evit ho mistri, en em uze, a ranke mervel e servich ho mistri, nag hen a vije bet tro da deuzi arc'hant hag acour, nag a zervicherien goz a vije bet rubanou var gorre ho dillad, a vije bet leac'h da denna dezo an tok, ar boned gant ar brasa respet!

Guir eo, e peb amzer euz bet louzeier fall er guella douarou, evel ma'm euz lavaret nousped ar veach, ha ne ket sent eo bet an oll blac'hed ha mevelloù a veve guechall. Mez, hirio en deiz, e pelec'h, e pe vro nemeur e caver servicherien mad hag aketuz, servicherien hag a gar ho mistri e guirionez hag ervez Doue?

Pe seurt giz a zo brema gant an darn-vuia euz ar zervicherien? ho affer, ho buez evit al loden vrasa, evit ar merc'hed coulz hag evit ar voazed, eo kerzed euz an eil ti d'egile, evel pa ve red dezo gouzoud e pe leac'h e ma ar vella souben, ar guella iod, ar guella taltez e peb parrez. A boan ho d'euz great anaoudegez gant tud eun ti, ma vez mall gantho ober hostisien nevez en eun ti all. Evit eur ger, divar netra, var benn eur guennek, eur spillen, e kemeront an teac'h, da bep mare euz ar bloaz, hag e vet e lamm an eost, e creiz ar prez euz an eost. Mar c'hoanta ar mestr, ar vestrez lavared dezo eur gomz pe ziou evit ho c'helenn, ho fidi d'en em gaoud kentoc'h er gear da zul goude ar gousperou, da zistrei abretoc'h euz ar pardon, da lakaad evez oc'h ar bed, da ziuall oc'h an danjer, da veilla var ho c'haosioù, da veza kempennoc'h en ho c'hoariou... Raktal e veler an eien o sevel var galon ar plac'h, ar goad o sevel da benn ar mevel... Ar plac'h ne d'euz c'hoaz nemet pemzek vloaz... Ar mevel n'eo ket great gantho he drivac'h vloaz... An eil hag egile n'ho d'euz ket c'hoaz var ho c'hont eun anter dousen gresioù... Ar plac'h ne d'euz nemet eun diou losten... Ar mevel n'en d'euz ket daou vragou var he hano... N'euz forz, sul disterroc'h eo ho oad, berroc'h ho danvez, sul kentoc'h e kemeront tan... Hag e vet gant coan, plac'h ha mevel a zo goestl da stlapa eno scudel ha loa, ha da c'haloupad er meaz, evit lezel da zoroc'had keit ha keit all eur mestr direzon, eur vestrez ne bar nemet scandalad...

LAN AN DALL.

AR C'HOLERA MISIONER BRAZ.

Paol: Ia, va mignoned, ar c'holera a zo eur misioner braz. Nag a dud, pere 'o devoa ankounac'heet an hent euz ar gofesion, a zo bet kaset gan-t-ha da goves! Nag a re-all, pere na reent pell-a-voa nemed kofesionou fall, a zo bet diluc'het d'ezo ho zeod ha lakeet gan-t-ha da ober kofesionou mad! Nag a dud, pere ne zontent mui e Doue nag en ho ene, pere ne lavarent mui pedenn e bet na diouz mintin na diouz noz, a zo bet digaset sonj d'ezo gan-t-ha euz ho C'hrouer, euz he varnedigezou, euz ho ene, hag a lavar brema eur bedenn benag! Kontit c'hoaz an oll bec'hejou euz pere 'en deuz pelleet hag an oll oberou mad 'en deuz douget da ober. Kontit dreist-peptra an oll eneou 'en deuz-en kaset d'ar baradoz, ha pere, martreze, na vident et morse di panevet-ha.

Evid gwir, kalz euz an eneou kaset gan-t-ha d'ar bed all, n'ed int ket et rag-eon d'ar baradoz; eul lod braz anezo a zo et d'ar purkator. Mes, n'euz fors, pa 'o devezo peur-c'hreet ho finijenn enno, e zaint d'ar gloar eternal.

Hogen, va mignoned, ha n'ed eo ket se beza eur prezezer mad, eur misioner braz?

Tomaz: Me na welan ket, va mignon Paol, e raffe ar c'holera an oll burzudou a leverez. Te a esa roi d'eom da gridi ez eo ar c'holera eur c'hlenved digaset espres gan Doue evid konvertisa an dud. Me a grette kentoc'h e tenfe euz a berz an diaoul. Gwel: ar c'holera a zo eur c'hlenved foll, brutal; laza a ra an dud dioc'htu en eur grogi enn-ho; ne ro ket amzer d'ezo da ober ho zontj, d'en 'em brepari d'ar maro, pas zoken da reseo ho zakramanchou, pe da vihana d'ho reseo ec'hiz ma eo dtet.

Paol: Da genta, te a ra re a henor d'an diaoul, va mignon Tomaz, o roi galloud d'eza evel-se da zigas klennvejou war an dud ec'hiz ma plij gan-t-ha. An diaoul, evid gwir, ne vank ket d'eza c'hoant na kenneubend galloud da ober droug, pa vez lezet; mes Doue na lez ket aneza da ober an oll droug a garffe. Ne ankounac'ha ket ar poz-ma euz da gatekiz: kemment a c'hoarvez war an douar, a zroug evel a vad, ne c'hoarvez nemed dre volontez Doue pe dre he bermision, nann, netra ne finv en Nev ha war an douar nemed gan aotre Doue. Evel-se, ma eo an diaoul a zo o labourat er c'holera. — Me ne ouzon ket, te ne ouzez ket kenneubend. Ar pez a ouzon eo e lez Doue aneza a-wechou da ober eun tamm he reuz war an douar. Lavarom gwell, Doue 'en 'em zervich euz aneza a-wechou evel euz a eur bourreo evid kastiza an dud, pa ne vez ket kontant euz anezo. — Te a voar, ar rouaned euz ar hed-ma 'o deuz ho bourveyen evid seveni ho barnedigezou, evid kastiza euz ho ferz an dorfetouryen. Doue 'en deuz ivez he vourveyen evid skoi, evid punisa torreryen he lezennou, hag an diaoul a zo eunan da vihana euz ar vourveyen-ze. Mes, ec'hiz eur bourreo na ell ober nemed an droug merket d'eza gan ar roue, he vestr, an diaoul ivez na ell skoi nemed pa vez lavaret d'eza gan Doue hag en doare ma vez lavaret d'eza — lakeom eta, mar kerez, ez eo an diaoul a zo o labourat er c'holera, n'ed eo nemed dre bermision Doue e labour ha ne ell skoi nemed ar re a zo merket d'eza.

Me a lavaro d'it d'an eil penaoz ar c'holera, o skoi evel eur brutal hag o samma an dud ker buhan, a ra dre enno muioc'h a vad eged ne raffe o vont goustadig d'ezo.

Tomaz: Ezomm em beuz evid kridi e prouffez mad d'in kemment-se.

Paol: Gwelom, Da genta, te a voar, va mignon Tomaz, e klask Doue ar mad memes er goallennou dre bere e teu d'or c'hastiza. Doue or sko er bed-ma, neket dre vuhanegez, neket evid or c'holl, mes dre garantez, evid on distroi diwar an hent fall hag or zavetei. Lavaret or beuz se deja. Te a amzavo, d'an eil, ez eo Doue goaz da c'houzout petra a renk da ober evid or zavetei. Hogen, ma voar Doue petra 'en deuz da ober evid or zavetei, ha ma ne glask nemed or zelvidigez eternal e kemment a ra hag a bermet war an douar, penaoz neuze e c'houffez-te blama ar c'holera da veza brutal, da laza re brim an dud? Ar c'holera a lavarffe d'it: « Me a zo ordrenet d'in ober evel-hen; ne raan nemed senti. Hag an ini 'en deuz e gourc'hemennet d'in ober ar pez a raan, eo ar mestr.

« Eur mestr mad eo ha gouzout a ra dispar petra a ra. Petra a respontez-te d'ar c'holera? »

Mes gwel gan da zaou lagad da unan ez eo, dhe he brimder memez e ra ar c'holera kemment a vad.

Da genta, remerk penaoz, pa vez ar c'holera er vro an oll, pe kouz lavaret an oll, a zo kalz pe nebeud en aon hag a zontj kalz pe nebeud er maro. Evid gwir, imennou a ra van da na pas kaout aon, a esa c'hoarvez d'ar c'hlenved imennou all a boany da gas euz ho spered peb sonj euz ar maro. Mes kaer 'o deuz: ar re a c'hoarza a jomn glaz ho c'hoarza, hag ar re a boany da zontj epken da veza, a zihun aliez en noz, spoutet gan eun buhvre a varo.

An traou eta o veza evel-se, di e ar zontj euz ar maro o veza 'en 'em lojet en oll speredjou hag an oll da vervel hag ispisial da vervel daonet, o veza krog en oll galonou, ar pez a zo eur genta dispozision vad, petra a ra an den, pa gouez klaon, skoet gan ar c'holera? dioc'htu e lavar d'eza he-unan: « Assa! a ma n'ez euz ket da zale. Abarz div heur ac'hann martreze e in 'en kaset en tu-all. Buhar eta da glask d'in ar beleg. Ar beleg a lavar ec'hiz ar c'hlanvour. « Mar dalean eur c'hard heur, martreze n'er c'havin ket beo. » Redeg a ra eta dioc'htu.

An den klaon, pa zigouez ar beleg, a zo greet gan-t-ha he examen a goustians. Kommand a ra dioc'htu he gofesion, eb na renker he bedi, taoler a ra da genta er mez ar pec'hejou braz, ha goude beza kofeseet ha het an absolvenn, e c'houlenn buhan he zakramanchou all, mar d'euz moyen d'ho reseo.

An traou a zo greet prim, eun tamm hast, mes greet mad ez int. Te a lavar n'eo deuz ket an dud an amzer da reseo ho zakramanchou dijeza gan ar c'holera. Eo, amzer 'o deuz, ha reseo a reont anezo peurluvia. Dibaod ne varv eun den, epad ma ren ar c'hlenved nevez er vro, eb beza resevet he reizou, pe da vihana ar re reta. Muioc'h a dud a varv en amzer ordinal eb ho zakramanchou eged epad ar c'holera, ispisial e touez ar young'hi-zyen. Bourc'hi-zyen kaer, ar re anezo hag 'o deuz neubend a feiz — ha kalz a zo lojet enno. — pa gouezont klaon gan ar c'hlenvejou ordinal, gan ar c'hlenvejouze pe ne lazont ket an den dioc'htu mes a les amzer gan-t-ha da ober he zontj, 'en 'em hast da glask ar midisn d'ho farea, ha neket ar beleg d'ho c'hoarves. Amzer a voalc'h 'o deuz a tao da lakaat urz en ho c'housians, da assuri ho zelvidigez eternal, da reseo ho zakramanchou. Koulskoude an traou a bres, ar maro a dosta hag ar beleg n'ed eo ket c'hoaz klasket. Mont a ra erfin an den Doue, klasket pe aneza he-unan, d'ho gwelet; kemmer a renk troyou evid komz d'ezo euz ar gofesion, ha c'hoaz aliez, goude ober fors bizitou, goude pidi ha poursu, ne deu ket a benn d'ho disida. « Amzer azo, » emez-z-ho; « netra ne bres. » Hag erfin e zeont euz ar bed-ma, kalz anezo, eb sakramant e bet, pe d'an hirra gan sakramant an ouen peini 'o deuz resevet, pa voant o treman, hag a-wechou goude beza tremenet.

Mes gan ar c'holera ne c'hoarvez ket evel-se, Ar bour-

hiz neubeud kristen evel an den ordinal, kerkent skoet, zo spontet, ha kerkent spontet, a zo konvertiset. Goulenn a ra buhan hag eb mez ar zakramanchou, ho reseo a ra buhan, ha buhan goude e varv (ma 'en deuz da ver-vel), eb beza bet an amzer da zistroi war an tu fall, ha setu eun ene saveteet.

Goullennit digan an adronez beleven, digan re gær evel digan ar re diwar ar mæz, pere 'o deuz 'em gavet da ober ho c'harg en eul lec'h epad ma rene enno ar c'hamera, ha n'ed eo ket gwir ar pez a lavaran? N'euz ket pell eunan anezo a lavare diraz-on penaoz er bloavez 1832, o veza d'an ampoent kure e M.... e welaz e vervegan ar c'hamera er gær vraz-se, en eur ober pevar miz, tremen 800 den, hag eunan epken euz an 800 den-ze ha tremen a refusaz a-grenn ar beleg hag a varvaz eb sakramant e-bet. Eunan all a c'hinaz hag a lavaraz gortoz : hem-ma a drappaz eun tamm absolvenn hag eun elvennaouen, pa voa o tremen ha pa n'en devoa mui tamm anaoudegez e-bet. Ar re-all oll 'en 'em hastaz da reseo ho zakramanchou, hag oll e resevzont anezo. Ar beleg a lavare d'in ar pez a verkan a-ma, n'en deuz ket sonj e vize marvet nikun all eb beza da vihana kofeseet ha bet an absolvenn. En eun amzer ordinal gwelit ha c'hwil oz pezo war 800 den marvet en eur gær varc'had a Vreiz-Izel 800 den war bouez eunan pe zaou, kofeseet hag absolvet war an heur euz ho maro ! AN ERMIT.

Hano ar Zant evit ar Sizun-ma.

- DILLUN 16 GUENGOLD. — Sant Corneil ha Sant Cyprian merzerien.
- DIMEURS 17. — Mercou ar pemp gouli e corf Sant Fransez.
- DIMERG'HER 18. — Sant Joseph Cupertin. Cotuerou, iun ha vijel.
- DIZIQUER 19. — Sant Janvier hag he guenverzerien.
- DIRGUENER 20. — Sant Eustach hag he guenverzerien. Cotuerou.
- DISSADORN 21. — Sant Maza, abostol. Cotuerou.
- DISSUL 22. — Pemzevet sul goude Pantecost. An Itron-Varia-a-druez.

An Abostol hirio :

Doze en he c'hallout en deuz ho penniguet, rag dreizoc'h en deus casset da netra hon enebourien. An aotrou, an Doue braz en deuz ho penniguet, c'hui merc'h, dreist an oll verc'het a so var an douar. Benniguet ra vezo Doue crouer an Env irag an douar, dre ma en deus savet hirio ken huel hoc'h hano, ma ne eano mui an dud d'ho meuli, ha ma o devezo sonch da viken euz a c'hallout an Aotrou Doue; evitho oc'h eus lakeat ho puez var var, o velet nec'hamanchou ha trubuilhou ho kenvroiz, hag oc'h eus miret na vijent distrujet dirag an Aotrou hon Doue. LEVR JUDITH. XIII. G. M.

KEBERER.

Ar zul kenta a vis guengolo ez euz bet eur solanite gær e Folgoat. Breuriez Sant Visant a Baul euz a Vrest a so boas da zont di bep bloas da bardona d'ar zul-ze, hag er bloa-ma int bet adarre. Hoguen er bloa-ma e voa en em gavet eno tri Escop da guemeret perz er gonel, Aotrou Escop Kemper, Aotrou Arc'hescop Haiti, hag Aotrou Escop Burlington. Pell braz a voa n'e doa ket bet iliz Folgoat eun hevelep henor.

An daouzeg a vis here, retred brezoneg evit ar merc'hed, e Lesneven hag e Kemper.

An Aotrou Bescou, beleg a escopti Kemper, missioner en euz Ceylan, a so maro nevez zo.

Eryez paperiou an Departamant an niver euz ar beo hag euz ar maro, er Finister, epad ar bloas 1866, a zo bet evelen :

Beo.....	22,918
Maro.....	19,509

Ar beo en deuz gounezet var ar maro. 3,409

Hoguen gonscoude pa vez laket ar bloas 1866 e kemgant ar bloas 1865, eo bihaneat an niver euz an dud e Finister, epad ar bloas diveza euz a 1,519.

Eost 1866 en doa roet e Finister :

Guinis.....	322,896	pouezel pe hectolitr.
Segal.....	410,056	—
Eiz.....	512,240	—
Kerc'h.....	1,419,675	—
Ed-du.....	817,000	—

Eun nebeut poezelladou eiz ha kerc'h muioc'h evit a so red evit beva tud an Departamant.

E 1866 ez eus bet cant trizeg tan goall e Finister.

Eur medesin evit an dud a vor, euz an Autrich, a lavar ar pezo ama varlerc'h divar benn an Impalaer Maximilian.

Er bloas 1853, eul lestr hanvet *Minerva* ha renet gant an Duc bras Maximilian he unan, en devoa eun dervez taolet an heor, da lavaret eo, a voa chomet a za var aodjou an Albani. Bez'ez oa var al lestr eur martolod bet gouliet hag a ioa toc'hor. An Duc braz her gouezaz, hag a c'hourc'hemennas dioc'htu clase eur beleg da rei he zakramanchou diveza d'ar martolod kez. Hoguen caer a voue ne gaffot beleg ebet. « Mad, eme Vaximilian, pa ne gavomp ket eur beleg da zont var dro an den clan, deomp oll d'an daoulin en dro d'he vele, ha pedomp Doue da rei dezhan ar c'hras da gaout keuz d'he bec'hejou hag eur maro mad. » Ha kerkent ez a d'an daoulin he unan e penn he oll vartolodet. Goulen a reas neuze eul levr a zevosion ; mes den n'en doa. Goulen a reaz eur chapeled, ha ne voa nicun. O velet-se an Duc braz a ias d'he gamprig hag a zigasas gantha eur chapeled hag eul levr pedennou. Neuze e roaz ar chapeled d'ar medecin hag e lavaras dezhan : « Lakit ar chapeled-ze, a zo bet roet din gant va mam ; lakit-hen d'an hini clan var he beultrin, ha ni, pedomp. » Neuze e tigoraz he levr pedennou, hag en em lakeas da bidi c'hoec. An daelou a zeue euz he zaoulagad. He beden, eme ar medecin, a voue silaouet, credabl, rag an den clan a varvas didrouz, evel pa n'en divije tam poan. G. M.

PRIZ AN ED.

KEMPER. — 7 guengolo.		PONT-NABAT. — 5 guengolo.	
Priz ar c'hant lur.		Priz ar c'hant lur.	
Guinis....	46 lur, « c.	Guinis....	45 lur, 14 c.
Segal.....	12 lur, 37 c.	Segal.....	11 lur, 25 c.
Eiz.....	9 lur, « c.	Eiz.....	9 lur, 50 c.
Ed-du....	8 lur, 18 c.	Ed-du....	10 lur, 21 c.
Kerc'h....	9 lur, 67 c.	Kerc'h....	10 lur, « c.
Ayalou-douar	4 lur, 50 c.	Ayalou-douar	4 lur, 25 c.

Ar Gerant: AR. DE KERANGAL.

Kemper, moulet gant AR. DE KERANGAL, Moulet an Escopti.

FEIZ HA RBEIZ.

KELOU A BEP BRO, HA KENTELIOU VAR BEP TRA.

DIGASSET BEP SUL

Da guement Christen a goms ar brezonec.

Eun Abonnament d'ar Gazeten a goust :

Evit eur bloas.....	DAOU SCOUET.
Evit c'huoc'h miz.....	EUR SCOUET.
Evit tri miz.....	C'HUEC'H REAL.
Eur gazeten ebken.....	DAOU VENNEG.

Ar bacamant a dle beza great araog caout ar gazeten.

KEMPER, 21 Guengolo 1867.

Unan bennag en deus lavaret ne deus den ebet var an douar ken egredig hag eun den discredik ; da lavaret eo, ar re o deus mui poan o credi guirionezou ar feiz, ar re ne fell ket dezho credi d'ar burzudou a ra Doue avechou dreizhan he unan pe dre he zervicherien, ar re-ze a vezo ar re guenta o eridi kement sorc'hen, kement fals creden zo er vro, o eridi kement furlukin a voe zo ober eun dro gam, eur furlukinez bennag evit teleur poultren dezho en ho daoulagad. Evelse lavarit d'an dud-ze, sperejou cre ha tud a benn var ho meno ; lavarit dezho ez eus digouezet eur burzud ama pe ahont, ez euz pareet eun den clan var bez person Ars, ez eus pareet eun all o vont da bardona da Rumengoll pe da zantez Anna, ez eus pareet eun trede goude eun navet great en honor d'ar Verc'hez pe da zant Joseph, hag e velot eur musc'hoars faüs var ho muzellou, hag e c'hejint ho fenn, hag e lavarint marteze ne deus nemet ar re ziot hag a gred traou evelse. Lavarit dezho avad ez euz, e Paris pe eleac'h all, eur furlukin hag a ra burzudou, hag a bare an oll, ep louzou ebet, dioc'h kement clenvet zo, gant eur guer epken, evel pa ve mestr var ar vuez ha var ar maro, neuze hor sperejou cre a gredo dioc'htu, ha ne ket epken e credint, mes c'hoaz en em lacat a raint da ober meuleudi ar furlukin ha da gas ar brud anezhan hirra ma c'hellint. Ne eanint d'her fougueal ken na deui ar justis, o cregui en ho den, da rei dezho da c'houzout sclear hag anat ne voa ho furlukin nemet eun trompler hag eul laer.

Ha ne ket epken e Paris pe er c'hæriou eo e caver furlukinet evelse, ha bandennou tud diskiant avoalc'h evit treizia an oll gueier a zistagont; caout a rer stang avoalc'h ive var meaz euz an doctoret-ze a ra, emezho, burzudou evel ma plij gantho ; o deus louzou ha comzou guest da barea pep clenvet. Sini a reont ho c'bloec'h ho unan crea ma c'hellont. Pep goueziegeuz o deus ; studiet o deuz an oll skianchou, da lavaret eo, n'o deus studiet nicun a zevri. Hoguen mar guellont dre ho furlukinez, gullet

ALIOU.
Ar scrijouro, ve c'hoant da lacat ar gazetenn an dleont da adressi oll d'an Aotrou MORYAN, Beleg e Kemper, 21 Guengolo. Ar pacamanchou a dleer da adressi d'an Aotrou SALAUN, ebken. An abonamant a guemerer e ti an Aotrou SALAUN, librer, ru Kereon, e Kemper.

o parea unan bennag euz ar re zo bet oc'h ho c'hoant mar guellont zoken digouezet da lavaret pe eleac'h eo dalc'het eur c'huoc'h, setu eno avoalc'h evit re dezho eur brud dispar a hed meur a leo d'for hag ato gulletoc'h brud a bell evit a dost. Mad var ar meaz evelse kera, ne deus nemet evessaat, hag evez o gulletoc'h eo an reo deus nebeuta Relijion, an re so prest da gaketal d'validenn ar guirionezou a brezeger dezho, da lavaret eo an re zo toc'hora ho feiz, eo ivez ar re a gredo kenta d'ar furlukinet-ze. An den en deuz izom da gridi eun tra bennag, ha ma na gred ket ar guin, e credou ar gaou. Ar peza ra ma na fell ket d'ar re o deus nebeuta feiz eridi d'ar burzudou a ra Doue hag ar zant, ha ma credont ep marc'hata da oll zorc'hennou ar furlukinet, eo ma teu ar burzudou great gant Doue hag he zant da zigas da zonch d'an den euz a oll c'hallout he grouer, euz he brovidans, he vadelez, hag ive euz a zeveriou an den en he guenver, eleac'h gueier ar furlukinet her pella dioc'h Doue, o rei da zonal e ve traou pe tud hag o defe eun nerz, eur c'hallout bennag dreizho ho unan. Hoguen an hini en deus nebeuta feiz, an hini ne heuil nemet ar relijion n'ema ket ive calz e poan gant ar pez a zigas da zonch dezhan euz a Zoue nag euz ar pez a dle da Zoue.

Selerijen evit rei da anaout petra eo diner Sant Per.

Ar peza hanver diner Sant Per, hag a gal deomp zo unan euz an traou caera euz an amzer-ma, ne deo ket anavezet avoalc'h etouez an dud. Cals christemien so zoken ha n'hen istimont ket evel ma tal. Cridi a reont ne deus meneg nemet da rei eur sicour bennag d'an Tad Santel, ha n'en em lakeont ket calz e poan gant kementse ; rag sonjal a ra dezho o devezo ato ar re binvidik calon vad avoalc'h evit rei d'ar Pap kement en deuz izom. Ar bobl, a c'houlenner outhan eur guennec pe zaou er miz, ne zonz ket ec'h elfe ar Pap caout izom euz a guen nebeut-ze ; hag evelse en deus diegut o rei, ha prest avoalc'h e c'hanfe ar pez a ro eun aluzen roet

d'an hini so ar penn euz a zaou c'hant milion a gristenien.

Pa gomzer a ziner Sant Per, ne dleer ket sonjal ken azel-ze. Pii nao a vef evel eun hermit, hag a eil aez dioueret pep tra. « Pevar real bemdez, a lavare Pii seis da Napoleon kenta, a zo avoalc'h evit Chiaramonti goz. » Diner Sant Per ne ket eun aluzen eo. Eun dle eo o deus bugale vad e kenver ho zad; eun dle sacr eo o deuz ar gristenien e kenver Jesus-Christ; eun dle eo o deuz ar broiou, ha dreist oll ar Frans, hag a dleont da baea evit kenderc'hel ar relijion, evit mad ha peoc'h ar broiou.

Diner Sant Per so eun dle o deus bugale e kenver ho zad. Ar Pap ha ne deo-hen ket tad an oll gristenien fidel? Mouez an oll bopliou ha n'e deuz-hi ket a viscoas roet dezhan an hano kun-ze a dad? Ha ne ket hen eo a ro d'hon eneou ar vuez euz ar c'hras? Ha ne ket hen eo a ro dre ar bed oll ho gallout d'ar veleien ha d'ar breuriezou burzuduz-ze a ia e pep leac'h en he hano ha kennerzet dre he vennoz, da gas ar c'helou mad, ar peoc'h hag an esperans? Ha ne deo ket hen a zigas deomp dalc'h mad sonch euz hon deveriou e kenver Doue hag a ro deomp reolennoù evit hon ren? Ha ne deo ket hen eo a vir ouzomp da goeza pa vank hon nerz, hag a guinnig deomp ar pardon, a asten deomp he zorn pa vezomp coezet? En eur guer ha ket hen eo ar c'han dre behini e turet trugarez Doue varnomp? Penauz anaout kement a vadoberou euz he berz ep he garet gant teneridiguez, evel bugale? Hoguen an hini a gar, zo douguet da zioueret eun dra bennag evit an hini a gar; ha ma na fell dezhan dioueret netra evit eun den, ec'h eller lavaret n'her c'har ket. Ar map ne zicourfe ket he dad, pa vez en dienez, a ve eur map digalon. Bez'e tle beza prest da c'houzaon evit an hini a gar, d'he zicour pa en deuz izom; da rei dezhan ar pezh zo aez dezhan da zioueret, ha zoken ar pezh en defe izom anezhan he unan.

Mar en deuz eta ar Pap hon tad, izom euz hon arc'hant, cassomp-hen dezhan; mar ema e danjer ha mar guell hon divrec'h hen difen, deomp da rei sicour dezhan. Ma na ellomp ober ken nemet pidi, pedomp; ar beden e deuz ive gallout. Ar Pap a bed bemdez evit he vugale, bemdez e sav he zivrec'h etrezeg an env evidomp, hag e ped Doue da bellaat ar dizeuriou so o c'hourdrouz an Europ. He vrassa soursi gouscoude so evit an eneou. Gouzout a ra petra dalont, ha gueleit eo bet o tifen, a enep oll gounnar an dispac'herien, ene eur c'hrouadur deut da veza he vuguel. Mar plij dezhan diner Sant Per, ne de ket abalamour ma zeo eur sicour evithan, mes dre ma vel eno eur merc a feiz aberz an oll gristenien. Diner Sant Per marteze, ma ve comprened mad ha skignet, eo a zaveteo an oll broiou. E guirionez eun dra eo hag a zo evit an oll: « Bez'ez eo diner aour ar pinvidig a ell rei eals; diner arc'hant ar re entre o deus calon vad; diner kevr ar paour a blij kement da Zoue; en eur guer bez'ez eo ofrans an oll vugale d'ho zad, pinvidik, paour, desket, dizesk, coz, iaouank, marc'hadourien, micherourien, derveziourien, labourerien; bez'ez eo ofrans kement hini a gred e Jesus-Christ hag her c'har, ha n'o deus ket a aoun evit diskuez ho feiz hag ho c'harantez

evithan, en eur rei ho ofrans d'an hini a zalc'h leac'h dezhan var an douar.

Evelse diner Sant Per ne deo ket epken eun dle evit ar vugale e kenver ho zad, bez'ez eo ive eun dle sacr evit an oll gristenien.

E guirionez, petra eo ar Pap? Hen lavaret on eus bremaic, ar Pap a zalc'h leac'h Jesus-Christ var an douar. Hoguen Jesus-Christ a so Roue. He hano hen lavar: Christ a sinifi frotet gant oleo evit beza Roue. An hano a honor eo a roe an Hebreuet d'ho frinset. Jesus-Christ he unan en deus lavaret oa Roue. Bez'ez eo gallout ha beli Doue var guement so crouet. *Omnia quæcumque habet Pater, mea sunt.* En eul leac'h all e lavar: *va zad en deus roet din kement a so var an douar.* MATH. XXI-27. Kement a so d'am zad a zo ive din me. Sant Ian, XVI, 15. Kementse so beza e guirionez Roue. Ma na deo ket salvezet dezhan diskuez oa roue epad ma veve var an douar, da viana en deuz hen diskuezet pa c'hanaz ha pa varvas. He zetans a varo staguet oc'h he groaz a verke ive e voa Roue; Jesus-Christ a so eta Roue, hag ar Pap, o terc'hel he blas var an douar, a zo Roue evel dhan. Ni on euz. evel christenien, ar memes deveriou en he guenver, evel on euz. evel fransizien, e kenver hor prins hag hor bro. Evel fransizien, e tleomp sicour an tron da luguerni, e tleomp sicour an hini zo en hor penn, da ellout diskuez gallout ar Frans en diaveaz; da ellout ive, en diabarz, kenderc'hel an descadurez hag ar micherou pere a ra honor ar vro; rei digor d'ar c'henvers ha d'al labour douar a ra hor pinvidiguez; recompansi ar re a ra vad d'ar vro; sicour ar re so en dienez; en eur guer scuilla an oberou mad dre guement leac'h ma tremen. Evel tud euz ar vro, ez eo eun dever evidomp dioueret pep tra evit difen frankiz ha peoc'h hor bro.

Setu aze hon deveriou evel tud euz ar vro hag evel sujidi. Ma ne falle ket deomp anaout an deverion-ze, ne verifemp ket douguen an hano caer a fransizien, Hoguen ha bihanoc'h eo hon deveriou a gristenien? Hag hon dle e kenver Roue hon eneou ha nebeutoc'h sacr ef-hi abalamour n'eus den oc'h hor c'hontragn d'he laea? Abalamour ma en deus Jesus-Christ savet ken huel dignite an den ma zeo salvezet dezhan e rajemp a volonte vad ar pezh a rajemp, evit caout mirit oc'h hen ober, e credimp ne dleomp netra d'an iliz? Ar gristenien guenta ne zontent ket evelse. Digas a reant ho madou da dreit prins an ebestel, ha petra bennag ma voa nebeut anezho c'hoaz, ho c'henta soursi a voue da lacat da veza dileber an hini a ioa en ho fenn, ha da rei dezhan kement en doa izom evit gallout skigna aviel Jesus-Christ dre ar bed. Setu aze penauz eo bet savet da guenta diner Sant Per, ha kendalc'h bet eo bet ato abaoue en iliz e guiz pe c'hiz.

Ha penaus ne ve ket evelse?

Evel Roue an eneou ha penn spirituel an oll broiou, ar Pap en deus deveriou ha cargou pounner da zouguen. He c'houarnamant en em skign var ar pemp loden euz ar bed. E Rom ema creiz ar c'houarnamant-ze. Rannet eo etre eis pe zeg *congregation*, ervez an izomou brassa

euz ar bed christen. Ar *c'hongregationou-ze* so evel cargou ar vintred er Rouanteleziou all. Re hir e ve lavaret petra e deus pephini anezho da ober evit mad an eneou. Hoguen ha pa na vije nemet ar *gongregation* pe ar vreuriez caer-ze hanvet *propagand*, savet evit cas Eski-bien-ha missionerien da zouguen sclerijen ar feiz etouez an dud divadez, an dud gouez, ha ne vije ket eno avoalc'h evit digueri calon christenien? Ha guir on defe-ni da viret oc'h ar pabet brema da ober evit an dud divadez ar pezh o deus great ar pabet guehall evit hon tadou coz?

Az eo gouzout eo red, evit traou evelse, caout eals tud hag ober eals dispignou. Hoguen ar Pap, lamiet digantha eul loden euz he stajou hag he leveou, pelec'h e cavo hen peadra da zouten ar c'hargou-ze ma na zeu ar gristenien d'he zicour? Goude oll ne ket d'ar Pap e roont. Ar Pap he unan en deus nebeut a izomou; eun dle eo a baeont da Jesus-Christ, eun dle sacr a zervich da lacat anaout ha caret hor zalver dre ar bed oll.

Ha pa na vije ket ar Pap roue, he gargou a vije ato ker pounner evel penn spirituel an Ilis. Hoguen ar Pap so var eun dro roue, beleg braz ha tad, ha brassa mad ar gristenien a c'houlou kendalc'h var he benn ar teir gurunen a dad, a veleg hag a roue. Piou na vel pegue-ment e tal dezhan beza roue evit kenderc'hel he c'hallout var an eneou ha delc'h ar Iliz e frankiz dre ar bed? Eur Pap hag a ve dindan gallout eur prins bennag, pe seurt frankiz en defe-hen evit cas he gueleannadureziou euz an eil penn d'eguil euz an douar? Frouden eun den a ve avoalc'h evit miret outhan da ober he garg ha golo he vouez. An æssa zo bet great; ha ma zafet adarre da glase hen ober, kementse a ve digas an Iliz var he c'his da amzer ar bersecutionou. Kement pobl a zo o deuz anavezet kementse, ha setu perag ar brinset, hon tadou coz, o senti oc'h bolontez Doue, o deut laket ar Pabet da veza rouanet var an douar.

« An amzer eo en deus great kementse, eme ar c'henta Consul, ha great mad en deus. » Pa lavare ar c'habiten bras kementse, edo e creiz he c'hloar; nevez savet en doa an aoteriou. Gueleit a rea, evel Charlemagn eo var Rom e ranket diazeza gallout ar Frans.

Eun dever euz ar strissa eo eta evit ar gristenien delc'h ar he za an tron-ze hejet kement gant enebourien hag a garfe discar kement zo. An droug speret n'en em drompl ket; mar clask lacat discar tron ar Pap, eo ma c'hesper dre eno distrinja he c'hallout var an eneou, hag ar c'hallout-ze eo a zo muia en he c'houlou.

Ne ket epken ar gristenien, mes kement den a urz a zo a dle souten tron ar Pap. Diner Sant Per ne deo ket epken eun dle sacr evit ar gristenien, bez'ez eo ive eun dle evit peb bro, eun dle hag a dlefe paea kement hini a gar tud he di ha tud he vro.

Eun den brudet, an Aotrou Thiers, a lavare e cambr ar gannadet: « Evit ar Pap, ne ell ket beza e frankiz nemet roue e ve. Eun *interest* eo ker striz evit an oll ma tle interest pephini ha peb bro tevel dirazhan. Ma ne ve ket ar Pap roue, an Ilis catolig ne ve mui unan, hag ar bed evit an eneou a goesse en he boull. »

An oll scriffagnerien a benn a lavar evelse: Tron ar Pap eo a zalc'h ar bed en he za. Tron ar Pap, eme an Aotrou Lamorisier eo a zalc'h ar broiou seven. Ne ell ket beza discaret ep ma coesse ar bed gantha. Kement taol a scoer varnezhan a ia an astaol anezhan beteg ar penn pella euz an douar; bep mean a zistaguer diouhan e tistarder ar bed.

Lavarit din, ha ne deo ket burzudus gueleit daou c'hant nao hag antercant Pap dioc'htu an eil varlec h eguil, an darnvuia anezho sant ha tud a ijin, o sevel hag o tiorren ar bed christen evel ma sao ha ma tiorren eun tad he vugale? Ha gueleit a reot netra ebet evelse etouez ar baiant guehall? Tron ar Pap eo an libelaskenden euz a Zoue var an douar. Evel Jesus-Christ, ar Pabet o deus treuzet naontek cant vloaz en eur ober ar vad. Dezhio omp dleour euz hor sevenidiguez a lougueomp kement. Clevet a rer tamal an dizurziou a veler etouez an dud; hoguen an dud hirio, gant ho dizurziou, a so eur baradoz, hag ar baiant a ioa eun ilern ma vent laket e kem gantho. An darn vuia euz ar re o deus scriet an histor, dre vez me voar vad ne gredont ket merca pe guer brein e voa an impalaerdet romen. Sevel a rableo ar penn pa lenner, en historiou coz, dizurziou ha torfejou Neron, Caligula ha meur a hini all. Ne ve nemet sonjal er C'holize, eleac'h ma za hirio ar belerinet da ober hent ar groas. Mad, eno ep amzer ar baiant, pa veze derveziou a ebat, e veler bete tregont mil den oc'h en em laza evit ober plijadur d'ar bopli-roue. Pa zigouez gant eun den a reng huel beza lazet, e veze laket he oll sclavet d'ar maro, ha pa vije ugent mil anezho. Ar sclavet-ze n'o devoa mui a reng etouez an dud; n'ho c'hemeret nemet evel traou marc'hadourez loened. A villerou ho zolet da zibri d'al loenet gouez ha d'ar pesked el lennoù. Al lezennou all ne dalient ket hirroc'h evit al lezen var ar sclavet, hag an torfejou all ne voant ket nebeutoc'h euzus.

Ma ne veler mui hirio a Jraou evelse etouez ar gristenien, mar e deuz ar vaouez cavet he guir, mar deus difen evit ar buguel, ma n'en deus mui an den ar guir scrijus-ze a vuez hag a varo en doa dindan al lezen baiant, eo d'ar babet omp dleour a guementse. Gourenet o deuz epad meur a gant vloaz oc'h ar guizioù criz ha mezuz-ze. Ar Pabet eo bet ar re guenta o tiscleria oa an oll dud breudeur. Hi epken o deus diskuezet ec'h elle tud eur vro heva ha padout ep sclavet. Hi eo o deus labourret muia evit mad ar bed. Hag ez afet da nac'h ar madoberouze a bere ne vercan nemet eul lodennig? Hag ec'h alle an Europ guelleat, difontet, caereat, sevenet, sclereat gantho, clevet dispac'hrien o erial, a enep cadour Sant Per? Hag an oll dud vad a jomfe ep ober netra evit sicour kenderc'hel ar gadour-ze pephini eo silvidiguez ar bed? Ni etrezomp fransizien, a so eun dever evidomp muioc'h evit pobl all ebet, lacat he respeti. Tron ar Pap, evel m'ema, so savet ganeomp: Doue so en em zervichat ac'han mp evit he zevel. Hon Tadou coz eo o deus roet d'ar Pab he stajou. Ni eo on euz ho difennet bete vroma. Ma n'ema ket hirio arme Frans e Rom, guer an Impalaer

so eno hag a dal eun arme. Evelse ive an dispac'herien a vel ervad ne allont ket didrona ar Pap keit ha m'ema dindan scoazel ar Frans.

Setu perag e fell dezho he lacat da goeza dre an dienez. Esper o deuz, evel n'en deuz ar Pap nemet eul loden euz he stadou, ne allo ket souten ar c'hargou hag an dispignou braz en deus da ober. An ifern eo a ro dezho an esperans-ze, ha ni a dle he lamet digantho.

Ar Pap n'en deus mui a leveou avoalc'h evit an dispignou a c'houlenn gouarnamant an Iliz oll. He arme a goust ive cals dezhan. Gousgoude ne c'houlenn netra, mes anaout a rer an dispignou en deus da ober. An dispignou-ze a zell ouzomp, ne ket epken evel christenien, mes ive evel Fransizien. An oll eskibien, an oll visionerien-ze a ia da brezeg ar Feiz er broiou gouez, a laca brudi ha respeti eno hano ar Frans. E kement bro c'houez a zo, eur beleg a ia di, a so diguemeret evel eur c'hannad euz a Frans. E bro sao-heol dreist oll, eur beleg, n'eus fors a be garter euz ar c'huz heol e ve, a so kemeret evit eur beleg a Frans. Hon tud coz bet o vrezecat eno evit bez hor zalver, a zo chomet beo ar zouch anezho. Kement pobl so e bro sao-heol so o daoulagad troet varnomp evel o c'hortos sicour diganeomp, kementse abalamour ma zomp ar c'henta pobl catolic, hag evelse dre eno, pa leverer eur c'hatolig, e leverer eun den euz a Frans. An henaoured omp euz an iliz, hag er broiou-ze, an henaoured eo a dle difen ho zud. Cridi a reont en deus Doue hor choazet evit ober ar vad e pep leac'h, hag hounnez a so sur eur garg caer roet deomp gant ar brovidans.

Evelse oc'h ober evit ar Pap, e reomp evidomp hon unan. Ne reomp nemet renta ar pez on eus bet digantha. Ne reomp nemet lacat da bara e leac'h all ar sclerijen a zigas deomp. Hor mad, hor feiz, pep tra a c'houlenn ma reimpe hor gallout evit kenderc'hel ar sclerijen-ze da bara. Eun dever eo evidomp; eun dle on eus da baea, eun dle hag a zo ken eas da baea! Rag petra c'houlenner evit diner S. Per? Pephini ar pez a gar, eur guenneguig bennag bep bloaz, ar pez ne oule paouraat den; ar pez a ell zoken ar re baour da rei; ha gouscoude ma ro pephini eun dra bennag, tron Sant Per a jomo en he za, ar relijon e devezo ar gounit, hag ar bed a vezo e savete.

G. M.

Paris. — Ar priziou a vertuz a roer bep bloaz a zigas tro da rei da anaout unan bennag euz an dud vad-ze nebeut anavezet gant an dud, hag o deus renet eur vuez christen, eur vuez caer, din da zervichout da skuer d'an oll dre an oberou mad o deus great. Setu ama hano unan bennag euz ar re o deus bet ar priziou-ze.

Agatha Mahais, euz a Anjer e deus gounezet he bara o verza frouez. Ne devoa nemet deg vloas pa gollaz he zad hag he mam, hag a neuze e servichas da vam d'he c'hoarezet bihanoc'h evithi. Da eis vloas varnuguent e kemer en he zi pemp buguel d'he breur collet gantho ho mam, hag e sao ar pemp buguel-ze bete na zint deut en oad da vont er bed. Morse ne fallas dezhi dimezi evit

gallout rei he oll buez d'an oberou a garantez. Abaoue ma e deus savet bugale he breur, he zi so eun hospita. Alao e vez enha tud clan, tud coz, mac'haniet, bugale, merc'hed iaouank tennet ganthi euz a hent ar pec'hed. Hag e vag ar re-ze oll, hag e deus pep soursi anezho, ha kementse gant he labour epken hag he zamig kenvers, ep goulenn netra digant den.

Leonia Lili, mestrez-scol e parrez Flechin (Pas-du-Calais) e deus great eur vad dispar er barrez-ze. oc'h ober scol dar vugale baour, oc'h ho maga hag ho guisca, o testum da zud, evit ho c'hentelia, ar plac'hedigou eat er meaz euz ar scol, o vont var dro an dud clan, dreist oll en noz, oc'h ober kement ha muioc'h evit e divije gallet da ober eur *sœur a charité*, ha kementse zoken evit ar re a rea pe a glaske ober droug dezhi.

Clotilda Bouquillon ne devoa nemet c'huezeg vloas pa voue red dezhi kemeret sourei euz he zud deut da veza coz ha cabac'h, euz he breur a goueze e droug sant hag enz he c'hoarezet n'o devoa ket a skiant. Pebez calon na dlle-hi ket da gaout evit tremen evelse he buez, o tioueret pep tra, o soursial euz a dud ha ne voant ket zoken guest da rei dezhi eur merk a anaoudeguez vad!

Rosali Foissac, ar gossa a bemzeg crouadur, a ia da zervicha d'an oad a drizeg vloas. He mestr a gouez er baourentez, hag hi a labour nos deiz evit rei bara dezhan. He zad hag he mam o vezo deut coz, e tistro d'ar gær evit sevel ar pevarzeg buguel a voa en ti, hag ho zao, hag ho laca oll da ren eur vuez christen. Ne ket dies gouzout peguement a hoan hag a dregas a dlle da gaout, hagant kementse e kemere c'hoaz en he zi, evit soursial anezho, tud clan, tud ha ne gavent mui dor zigor e nep leac'h.

Aglae Delon e deus tremenet he buez o repui bugale baour, minoret kez dilezet, oc'h ho maga, ho loja, ho guisca, hag ho c'helen bete ma vezent guest da c'hounit ho unan ho bouet.

Mari Duches so breizadez. Evit senti oc'h person he farrez a anaie he vertuz hag he pers calon, en em laca, d'an oad a eis vloas varnuguent da studia evit beza mestrez scol, hag abaoue ne oufe den lavaret peguement a vad e deus great d'ar vugale, d'ar re baour, ha d'ar re glan.

Jannet Lescop, ive euz a Vreiz, a so abaoue seiz vloaz ha daou ugent o rei diguemer en he zi d'ar vugale baour dilezet, da vugale c'hoas bihanig; oc'h ho scolia, ho maga, ho diorren e doujans Doue, hag o kemeret anezho an oll zoursi a elfe eur vam vad da ober.

Anastazi Gaudin a jom gant he mestr deut da veza intanv ha coezet er baourentez, evit sevel ar vinoret vihan. Eleac'h receo commanant, e tremen eul loden vad euz an noz o neza evit, gant arc'hant an neut, gallout guisca ar vugale.

Per Teule zo soudart ugent vloaz zo, hag abaoue, evithan da veza pell dioc'h he dud, ho mag. Cas a ra dezho, ep espern netra, he bae hag ar guenneien a c'hounit o labourat evel kemener.

Ne vercan ket an hanoiou all. Oll int christenien vad,

oll o deuz en em ancouac'heat ho unan evit sicour an nessa. Oll e tigassont deomp da zouch euz ar pez a lavar ar scritur en deus Jesus-Christ tremenet dre ar vuezma en eur ober ar vad, hag ar re a zo e guirionez he ziskibien a laca ho foan da vale var he roudou ha da ober evelldhan.

G. M.

PARDON AR ZALET.

Pardon ar Zalet — me a gomz euz ar Zalet a zo e kichen Montroulez, — pardon ar Zalet, a lavaran, a zo eur pardon dister, eur pardon netra (ervez ar bed), eur pardon didrouz, neubeud solanel: na vez nag oferen war gær, na prosesion, ha kalz traou all c'hoaz a vank. Koulskoude, an dra-ze na vir ket ez eo eur pardon mad, mad evid gloar Doue, mad evid selvidigez an eneo.

Koulz lavaret en oll bardonyou ez euz diou lodenn da ober, lodenn Doue ha loden ar bed. E pardon ar Zalet n'ez euz nemed evid Doue, netra evid ar bed. Da vihana, evel-se eo bet beteg-hen. Plijet gan Doue e kendalc'hfe da veza beppred evel-se!

Peini eo lodenn Doue en eur pardon? — Ar gloar a ro d'eza an eneo mad, ar bardonyen devod, pere a ya d'ar pardon, neket gad sonjou ar bed en ho fenn, mes gad gwir zantimanhou kristen en ho c'halon, gad eur gwir c'hoant da ober eur pardon mad, da lavaret eo da c'hloriffia Doue erfad, da honori he zent, da denna warn-ezo ho-unan ha var ho c'herent ha re-all grasou ho C'hrouer, bennozyou ha skoazel ar zent a zeont da bidi, d'ho zrugarekaat euz ar grasou ha sikourou o devez deja bet digan-t-ho pe dreiz-ho, pere a ya d'ar pardon evid kaout *pardon* euz ho fec'hejou, evid goulenn distro eun tad, eur pried, eur bugel ouz Doue ha grasou all, pere a ra ho beach en eur gana kantikou santel, en eur lavaret ho chapeled pe pedennou all. Pardoneryen evelse a ya d'an oferen, a ya d'ar gousperou ha d'ar prosesion, pa c'hellont chom war dro, 'en 'em zalc'h deread hag a vez devod en oll ofisou hag a zelaou gan respet ha gan gwir c'hoant da broffita ar brezegenn hag an avizou mad a roer d'ezo. Mont a reont ive, muia ma c'hellont, da goves ha da gomunia evid gloriffia Doue hag honori he zent dre enno en eun doare c'hoaz parfetc'h hag evid kaout digan-t-ho a soc'h a ze ar grasou hag ar zikourou a c'houlennont. Ar pardoneryen mad-ze a zistro d'ar gær euz ar pardon ho c'houstians dizam, ho ene laouen hag ho c'halon kontant.

Peini eo lodenn ar bed en eur pardon? — Loden ar bed, ha dre enno lodenn an diaoul, en eur pardon, eo ar pez a reer evit-ha, evid plijout d'eza hag a eneb Doue, da lavaret eo an dizurziou, ar mesventiou, al libertinachou, an amzevotion pe ar mank a zevotion euz ar fals pardoneryen, ha falloni ar re a fournis d'ho dizurzon.

Kalz a dud a ya d'ar pardonyou, mes neubeud, peurvuia, gad dispozisionou mad. Lod-na yeont d'ar pardonyou, ar yaouankiz ispisial, nemed gad plijadur redeg, nemed evid gwelet ha beza gwelet, evid c'hoari hag 'en

'em zivertisa; eur rum all a ya abalamour d'ar lein bardon. Ar seurt pardoneryen-ze, peurvuia, na yeont nemet meur d'an iliz, na heulyont nemet ar ofisou. Ober a reont van, d'an hirta, da dapout eun tam oferen, ha pelloc'h goude n'ho gweler mui war dro al lec'h santel.

Ar re-ze oll, c'hwil gompren, na yeont ket d'ar pardon evid gloriffia Doue, evid honori he zent, evid goulenn grasou; ne zontont ket zoken e kemment-se.

Beza ez euz hag a ya d'ar pardonyou gad dispozisionou falloc'h c'hoaz, gad sonjou ha deziron kriminal en ho c'halon; ar seurt-se n'em beuz ket ezom d'ed lavaret d'eoc'h, na yeont na da oferen, na da c'housperou; pe mar yeont, n'ed eo nemed evid ober goab ouz Doue hag ouz he zent dre ho mank a respet hag a zevotion beteg el lec'h santel.

Gwelet o peuz se oc'h-unan; beza ez oc'h bet en unan bennag euz ar pardonyou brudet-se a Vreiz-Izel. Hogen, penaoz e tremen an traou enno?

Derc'hent ar pardon, a-bred — lakeom eo brao an amzer, — e welit an dachenn ha beteg an henc'hon tost d'an iliz pe d'ar chapel, leun a hostiliriou, a dinellou, a staljou. Ar mili-kaz, ar c'hezeg-koad, an appalateryen ne maint ket euz ar re ziveza o tigouezout.

Tud a zeu a foul; kalz anezo a ya da glask eur banna-c'hig; lod 'en 'em laka da boumen war ar blasenn evid gwelet ar marvailloù; ar c'hoariou a gommanse e touez ar yaouankiz, ha setu digoret ar pardon... war an dachenn.

Souden ar c'hleyer a zop evid gelver an dud d'ar c'henta gousperou. Kemment o deuz eun tam feiz, a ya d'an iliz; ar re-all a jom gad ho bannac'hou hag ho c'hoariou.

Ar gousperou en iliz o veza achuet, e roer peoc'h da Zoue ha d'he zent epad ar rest euz an deiz-se. Mes gousperou ar blasenn, me fell d'in lavaret gousperou ar bed a gendalc'ho da rena beteg an noz.

Da gus-heol, ma ez euz reiz-e-kær pe eun tam *polis* — kement-se a zo affer ar mear, — an dud a dost a renk skampa d'ar gær (na roer mui d'ezo da efa, difenn a zo), ar re deuet euz a bell en 'em zalc'h sioul en tinellou pe tanchou, hag evel-se an hostizyen ha re-all a roer peoc'h d'ezo da gousket.

Mes, ma ez euz eur mear denig chentil, pas kre da ober miret al lezennou na d'ho miret he-unan, hag ispisial douget eun tamig d'he vanne, ne vezo ket a reiz, a *bolis*, hag e welot neuze penaoz e tremeno an noz en dro d'ar chapel.

Mes lezom kemment-se: re a draou or beffe da lavaret war an nozvez-se, ma ne vez ket a *bolis*. Beza ez euz gouliou ha n'ed eo ket brao ho dic'hobi; re e fleryont. An deiz a zeu; tud a zigouez a beb tu da glask ar oferen vintin, lod evid mont goude d'ar gær ha lezel ar re-all da zont d'an oferen bred, ha lod all, pere, daoust ma o deuz amzer a-voalc'h da vont d'an oferen bred, a gav gwelloc'h koulskoude kaout an oferen vintin, evid ma vezint liproc'h goude epad ar rest euz an deiz. N'ez

euz ket a zanjer e welot ar briz-kristenien-se, eur wech ma o devezo tapet eun tam oferenn verr, o tostaat mui ouz an iliz epad ar rest euz ar pardon.

An drede son a zo bet hag an oferenn genta a gommans. Goude an oferenn-ze e vez peurluvia eunan, diou, teir hag aleiz oferenn all. Er pardonyou, pere a verit an ano a hardonyou, e weler kalz eneo mad o komunia en oferennou-ze. Ar seurt pardonyou mad-ze n'ed int ket rouez e Breiz-Izel, dre c'hras Doue, ispisial e Leon.

An oferenn bred a gommans d'he zro. Leun eo an iliz a dud. Ar re n'o deuz ket gallet mont en iliz, a jom er mæz tro-var-dro d'al lec'h santel. An niver braz euz ar re-ma a ziskouez kaout feiz hag 'en 'em zalc'h mad; mes iniennou anezo a ra poan ho gwelet, ken amzevod ez int: na reont nemed sellet en dro d'ezo, kaozeal ha c'hoarzin epad ar Zakrifis santel. O payaned divez, pe-râg n'ed oc'h-ha ket chomet er gêr? Kalz muioc'h a verit o peffe o tremen eb oferenn, eget o klevout anezi en eur feson ken direspert ha ken dizevod!

Hag ar blasenn, penad e ya an traou enno? — War ar blasenn ne vank ket a dud, ho zok war ho fenn, epad ma ren an oferenn. En ho zouez e vez kavet meur a ini, ispisial euz a baotred ar c'heryou marc'had, ha n'o deuz bet c'hoaz tam oferenn e-bet en deiz-se. Petra faot d'oc'h? Ar re-ze n'o deuz ket ezom a Zoue evid beva nag evid mervel. N'o deuz ket aon kenneubend arâg ar ar c'holera. Ba! gouzout a reont mad divoall diout-ha.

An oferenn o veza achuet, ar re o deuz leinou pardon, a ya d'ho c'hask; ar re n'o deuz ket, a ya gan ho gwenneyn da leina daved an hostiz. Pep-ini a ra ec'hiz ma c'hell.

(Eur pennad-all eur vech-all).

SANT IANN HAG HERODES.

Ar prisoun.

Herodes: Deut ounn, Iann, d'as kuelec'... Ne res nemeur a van; Chom a res dilavar, azezet var da vean... Na ienna digemer d'eur roue d'a vignoun!

S. Iann: Va mignoun, c'hui l... *Her.:* M'en tou, va dourn var va c'haloun Karet ran ac'hanot, te blij din dreist ann oll N'eus ket eunn all par d'id e bro ar sao-heol.

S. Iann: Petra raffac'h eta d'ar re ne garit ket Pa zouarit e-beo ho kuella mignounet? Eunn toull, nos-du ennan, pa vez deiz e pep lec'h, Peder chadenn houarn stardet var va divrec'h, Mogerioù glazennek, dour ha bara divlas, En dro din soudardet gant klezeier noas... Chetu eno, neb aoun, merkou a vadelez... Hag em c'harit!.. Nan, nan, goab a rit, Herodes.

Herodes: Perak ive, prophet, perak emaoût atao O clasq va fistiga gant da gomzou c'hoero!

S. Iann: Chelaouit mad: Ann neb a goms a-bers Doue A zo dir var he dal ha ners en he ene. Deus ann Eac'h em beus urs da grial eb paoues: Pinijen, pinijen, grit ann henchou kompes; Goulaouet eo an deis, ann heol zo savet, List oberon ann nos, tec'hit dioc'h ar pec'het. Né larit ket: ni zo bugale Abraham, Divar ann aeret oc'h, flem o peus ha kontam...

Ha petra dalfe deoc'h beza deus eur voen vad M'en em daolit d'ann drouk ha ma rit mez d'ho tad? Doue m'en deffe c'hoant, er mein a zo aze, A c'houesfe ar vuez 'vit ober bugale. Pinijen, pinijen... Lemmet eo ar vouc'hal Heb truez e skoio... Voas aze d'ar gues fall, Dizale ann tiog a skubo neat he leur, Ar skao du vo stlapet da zevi en tan meur; Vouelit, huanadit, grit pinijen er-vad, Rogit ho calonou, ha non pas ho tillad, Chetu eno, roue, petr' am beus lavaret Da gals tud er gouelec'h, oll e vezent mantret, Evidoc'h-hu, siouas! ne rit ket mui a van Eget ann dud varo cousket dindan ho mean.

Herodes: Tra, n'oun ket eur sant bras, m'ar d'an d'ar barados E vezo krip-ha-krap, n'ouzon ket re penaos Mes piou eo ar prophet savet en hon touez A c'houlenn e ve great ann henchou ker kompes?

S. Iann: Eman var ann huel, eman bars en draonien, Vad a ra e pob lec'h d'ann dud klan, d'ar heorien; Dre ma za ar re zall koutils ha ni a vel sklear, Ann nep n'hell ket hale a vez nerzet he c'har; Ar re lor o-unan, skantet varno ar c'hik A ves, d'reur goms, rentet neat 'vel eur bugeliek Ar mor hag ann avel, ar vuez, ar maro A oar en anaout hag a veul he ano.

Herodes: Dious d'a lavar, ennes a ra cals burzudou.

S. Iann: N'oun ket dign d'a blega 'vit diskoulm he voutou. Trida ris dirazan araok m'oan deut er bed Trida ran hirio c'hoas ker mad eo em andret. Ia me, laoten dister, grichennet er gouelec'h, Me poultren ha ludo, me preonv buezet dec'h. M'em beus bet ann eur-vad, var ribl ster ar Jourdin, Da velet mab ann Env, Jesus ann oan divin, Deut eo betek ennon, stonet en deus he benn, O burzud!.. badezet eo bet gant dourn eun den. Pa zavas d'eus ann dour, ann Env a zigoras, En eun les aour ha tan voe troet ann oabl glas, Eur goulm a denn-askel a nijas da Jesus Hag eus bar ann Envoù, eur vouez galloudus: « Chetu aze, emei, va mab muia karet, Chetu va mab unik, mellezour va genet, Chelaouit-en... Jourdin, o ster dous ha santel N'hellin mui ho kuelec, nan mui araok mervel! »

Herodes: Me garfe da denna deus ar prisoun dioc'h-tu Mes goude Du, siouas, eman d'ar red Kerzu; Te gomzo em eneb hag ember marteze E ranken er bac'h-ma da zestum adarre.

S. Iann: Epad ma vez arneo e ves kurun ha tan, Epad ma viot fall e cleffot moues Iann; Grit pinijen pe deoc'h me c'hourdrouz voal-our; Perak en ho pales e talc'hit greg ho preur?

Herodes: Me ober pinijen, a grenn trei kein d'ar c'hik, N'er grin, kleo-mad, nemet pa vizin maro-mik, Guelloc'h e ve ganen mont e cris gant sata Eget kass en he hent eur vaoues a garan.

S. Iann: O roue dall! *Herodes:* Ken dall, ker fall a ma kir! Rag-se, prophet, ne deu ket d'am hiskinat mui; Dalc'h klos da zaoulagad, klossoc'h c'hoas d'a chinou, Evel ma maou-emaou, na trous, na rebec'hou. Me, Iann, zo galloudus, en tu deo en tu kleis E zeus tud var eves 'vit va dioual nos-deis; M'em beus keseg, kirri... pa evan guin pe zour Ne ket e kleus va dourn, mes en eur c'hatur aour; Ne da ket da gredi em be aoun rag Doue, Ann ifern ne ket great d'ann dud eus va doare. Ne ran ta fors ebet d'eus tan-meur, na bouc'hal.

S. Iann: Er gouelec'h e elevis Leonet o iudal, Ho moues a ioa dous e kenver oc'h hini Skrija ran oll ous o chelaou o vlashemi. Ar pec'het, Herodes, a lemmi bouc'hal Doue Neuze e sko, e trouc'h, evel luc'het ann Ee; Cant ha cant mil soudard d'o tional ve dister, Ho marc'h glas e-unan, ker skarv he zivesker,

Ma kleyer trous he ern o skei tear-tear ann hent. 'Vel eur barrad kasarc'h var eunn doen mein-skent, Ho marc'h glas dindannoc'h a gouezo sounnet-reud Pa falvezo d'am mestr lakat varnoe'h he vend. Taolit evez, m'o ped, var marv eur roue all, Ho tad oa, Herodes, pa rankan coms leal, Ha niveret o peus ar prenet dizoare A verve var he gorf, er sune, en debre? Mad ken niverus oant hag ar vugaligou A veuzas en ho goad var galoun ho mamou; Dourn Doue zo pounner, pounner evit ann oll, Pounneroc'h c'hoas evit ar rouanet diroll, Eur gurunen zo caer epad ma ves buez Mes nag hi voask ar penn, pa ziskenner er bes!

Herodes: N'am spouti ket. *S. Iann:* Klevit, c'hui lavar oun prophet, Mad ho sefans breman a velan displeget; Eur vantel a daoloc'h eun deis dre c'hoaperes. Var diskoas mab Doue digasset d'ho pales, Rag-se, en eur vro all, c'hui vevo harluet, Ker paour ha ken noas, ma vo mes ho kuelec; Goude ho tremenvah n'o po ken lienen Nemet an tamou teil staget ous ho croc'hen.

Herodes: Bah! bah! Caoc'hou! — Eur ger... gra din hirio al le E laoski dizavar Herodes da roue Hag out libr, ha te Iann, maget gant mel'gouez Te danvaio ganen deligou eur pales.

S. Iann: Biken. *Herodes:* Eleac'h croc'hen eur c'hanval disvlevet...

S. Iann: Dale hit ho tillad flour d'eur vaoues divezet; Va frisoun a blij din, karet ran va chaden, Ha pa vezoc'h eat kuit an toull-ma vo laouen.

Herodes: Dioual! *S. Iann:* N'em beus ket aoun, mes d'ide co krena, An donar skuis ganes a garfe d'as lounka.

Herodes: Dioual a lavaran... *S. Iann:* O mes! o falloni! Pried da vreur, d'a vreur, a zalc'hez en d'a dy! Kers, kers... c'huez ar pec'het a zo gant d'a vantel, Rusder ar pokou fall zo c'hoas var da vuzel, Kers diouz... *Her.:* Ketao... *S. Iann:* Da beleac'h e zes ta, Ne ket dre'h hent-ze eo, an or a zo ama.

I. W.

Hano ar Zent evit ar Sizun-ma.

DILLUN 23 GUENGOLO. — Sant Lin, pap ha merzer.

DIMEURS 24. — An Itron-Varia a Drugarez.

DIMERC'HER 25. — Sant Thomaz ar Guær nevez.

DIZIQU 26. — Sant Pater, escop.

DIRGUENER 27. — S. Com ha S. Damien, merzerien.

DISSADORN 28. — Sant Venceslas, merzer.

DISSUL 29. — C'huezecvet sul goude Pantecost. Sant Mikeal, arc'hael.

An Abostol hirio:

Doue a roas da anaout ar pez a dlie digouezout souden, o cas eun æl d'ho d'scleria da Iann he zervicher, hag hema en deus rentet testeni da goms Doue, en deus rentet testeni abers Jesus-Christ euz a guement en deus guelet. Euruz an hini a lenn pe a gleo ar pez so scrifet el levr-ma divar benn an amzer da zont, hag a voar miret ar pez so scrifet enha. Rag an amzer a dosta (*ma tigouezint*).

Iann (o scrifa) d'ar seiz iliz a zo en Asi. Gras deoc'h, ha peoc'h aberz an hini so bet, a zo hag a vezo; hag aberz ar seis speret a zo dirag he dron, hag abers Jesus-Christ an test fidel, ar c'henta ganet a douez ar re varo, Roue ar Rouanet euz an douar, pehini en deuz hor c'harret hag hor goalc'het dioc'h hor pec'hejou en he c'hoad.

Levr an Apocalips. I. 1. G. M.

Eur Chapel savet da Zant Roch e Plourin-Leon.

AN ERMIT a scrife er sizunveziou diveza e *Feiz ha Breiz* e voa ar c'holera eur Missioner bras. Setu ama hag a ziskuez ez eo e gairionez pep clevet stagus mad da zihuna seiz an dud, d'ho lacat d'en em drei oc'h Doue hag oc'h ar relijion.

Varlene an derzien typhoid a reas distruch e parrez Plourin-Ploudalmeze, hag e clevet tud ar c'harter o lavaret: « Ma carje Plourinis beza dalc'het mad d'ho devotion da Zant Roch, beza bet muioc'h a zoursi euz he chapel; ma carjent beza bet guelloc'h e kenver ar re so bet carguet euz ho eneoù, ne vize ket coezet ar voalenn-ze varnezh! »

Ar pez a rea d'an dud comz evelse, eo brema ez eus var dro daou c'hant ugent vloaz, e tenaz eur goal glevet da skei parrez Plourin, pehini, a leverer, a voa neuze brassa parrez a voa en escopti Leon. Tud ar c'harter a grede eo ar vosen oa ar c'hlenvet-ze, hag a roe dezhan an hano a *glenvet Kervoulouarn*. Tud ar barrez mantret ha strafuillet oll o velet an distruch a rea en ho zouez, en em voestlas da Zant Roch, ha souden ar vosen a eanas. Dre anaoudeguez vad e savjont eur chapelik, dindan hano Sant Roch, var dro tri c'harter leo dioc'h ar bourg, eleac'h m'en doa ar c'hlenvet great muia distruch; hag abaoue bete varlene goal glevet ebet ne voa deut da skei tud ar barrez. Huguen gant an amzer Sant Roch a voa ancounac'heat cals pe nebeut, hag he chapel a voa nebeut a zoursi anezhi.

Mes pa grogas varlene an derzien typhoid e parrez Plourin, ec'h anavesjont dioc'h-tu e voa breac'h an Aotrou Doue a boueze varnozho. Dont a reas da zoneh dezho euz a Zant Roch hag euz ar zicour en devoa roet guehall d'ho zadou eoz. Avoalc'h e voa kementse evit lacat tud hag a zo beo ar feiz en ho zouez d'en em drei oc'h Doue ha da c'houlenn digant an ens ar pez ne allent nemeur esperont digant an douar. Dioc'h-tu en em lakeont da zestum etrezho peadra da lacat sevel a nevez ha creski chapel Sant Roch.

Person Plourin a ro an doare euz ar chapel nevez; oll dud ar barrez en em laca a zevri parvia an ail d'eguil, hag ep dale eo pourchasset ar vein ar c'hoat, ha kement so red evit he zével; ar vicherourien n'o doa nemet labourat, hag ar pez labour a voue casset da benn e berr-amzer.

D'ar zul, eisvet devez a vis guengolo, e vouecasset e procession skeuden Sant Roch d'he chapel nevez.

Aotrou Person Ploudalmeze a vennigaz ar skeuden pe an imach-ze, a ganaz an oferenn bred hag a reaz eur brezeguen gaer eleac'h ma tiskuezas an izom on euz a skoazel ar zent, euz ar zent-ze e particulier da bere en deus roet Doue gallout var ar c'hlenvejou, dreist oll en amzer-ma ma zeus dalc'h mad en hor bro eur c'hlenvet spigus bennag o skei carter pe garter. Meuli a reaz ive feiz tud ar barrez, ar feiz-ze a behini e roent eur merk ken anat dre ar chapel o devoa savet, ha dre ar prez o devoa dis-kuezet d'en em erbedi oc'h Doue hag he zent en ho izomou.

An dervez-ze a voue evit Plourin, hag evit tud ar parrezion divar dro eun dervez a beden, eur guir dervez pardon. Goude beza pedet ha tremenet an deiz en devoision, an oll a zistroe d'ar guær laouen, ha gant an esperans ferm e teui Sant Roch d'ho difen en amzer da zont, evel m'en deus great en amzer dremenet, dioc'h ar goal glenjejou. G. M.

KELER.

Hano so da zevel e Pontivy, e departamant ar Morbihan, eur scol vraz evit al labour douar.

Bez' ez euz ive hano da lacat difonta pe difreusta al lanneier a so kement anezho e Breiz. Etre ar pemp departamant a Vreiz ez eus eis cant mil dervez arat dindan lann ha brug; da lavaret eo vardro ar palefarz euz an douar.

Er Gascogn ez eus dre galz a boan, great douar labour euz a gals douarou ha ne roent netra, hag e Breiz ez euz ive calz euz an douarou lann-ze ha ne zao netra enho, hag a ve aessoc'h, ervez an dud gouezieg, ho lacat da dalvout evit na voa douarou ar Gascogn. Ama ez eus calz lanneier ha ne c'houlennont nemet beza torret ha trempet, bez' ez eus calz all hag a rafe foenneier ma ve laket varnezho an dour a red hag a ia da goll e gouelet ar c'haniennou pe ar stankennou.

An tan goall en deus devet, er sizun dremenet, en Iliz Ergue-Armel, an aoter vraz hag an tabernacl gant ar vesselion sacr a voa enha. N'oar ket sur penauz eo croguet an tan. Cridi a rer goucoude eo bet croguet dioc'h eur pilet pe eur c'houlouen ha n'oa ket bet mouguet mad. Setu penauz e crog aliez an tan en Ilizou. Ar re so carguet da vouga ar goulou varlerc'h an oferen pe an ofisou all, a voug ar flam; mes ar goulou coar o deus mouchet teo, hag a jom pell goude avechou da voguedi, tan enho; ha pa vez tolet eur c'houlouen mouguet fall evelse en eur c'horn bennag, ec'h ell an tan dont da c'hori ha da gregui abenn eur pennad. Ne oufet ket eta lacat re a evez oc'h ar goulou-ze a zervich en Ilizou.

An naonteg a viz here, retred brezoneg evit ar mere'hed e Kemperle.

An Aotrou Gueguen, person Loqueffret, so maro er sizun-ma.

E departamant Mayen hag er c'harteriou tro var dro ez eus bet eun arneu braz er sizun dremenet. Ar gurun so coezet e n'ous pet leac'h. E kerig Evron e deus lazet en eun ti, eur vaouez hag eur verc'hig vian, hag en eun ti-all an tad hag ar map. E Castel-Gontier, e Martigne, e Laval e deus freuzet ha discaret tiez, mes ne deus lazet den ebet. E Maisonneil e deus pulluc'het daou benn kezeg ha goal laket eun all.

Euz a Vrozaoc e voa deut er zizun all eur vanden catoliket da bardona da guær Boulogn. Eur protestant

a fellas dezhan dont ive gantho, evit guelet petra eo eur pardon en Iliz catolic. Rag ar zaozon a gar guelet kement a zo. Ar protestant en em laca eta e mesc ar belerinet hag a ra evelldho. Souden e tigor he zaoulagad d'ar virionez; ar c'hras a antre en he galon, hag e c'houlouen kuitat he errol hag en em ober catolic. Diguemeret e voue er guir iliz, en derveziou varlerc'h, gant an tad Hermann deut euz a Vrozaoc e penn ar belerinet catolic.

An ed so eat var gueraat er zizun dremenet, er broiou all coulz hag e Frans, eme *Gazeten ar Meziou*.

Ar c'hlenvet var ar chatal so en em skignet e calz a garteriou euz an Allemagn.

Marvailou. — Lavaret a rer euz ar fransizien int gwest da gaketal zoken pa zeont da denna ho huanad diveza; hoguen setu ama eur Spagnol hag a so bet marteze treac'h c'hoas d'ar fransizien var ar poent-ze.

Eur Spagnol, dare da vervel, a velaz e touez ar re a ioa en em zestumet en dro d'he vele, eur recevoir euz ar guirion hag eur miliner. Ho daou oant mignonet dezhan. Ober a reas sin dezho da dostaat, hag ho fedas d'en em lacat en he guichen, unan a bep tu. Pa voant en em laket, unan en tu deou hag eun all en tu cleiz dezhan, e lavaras gant eur vouez toc'hor:

— Mad! brema da viana em bezo ar gonsolation da vervel, evel hor Zalver Jesus-Christ, e creiz etre daou laer!

— Ia, va mignon, eme ar meliner; n'oc'h euz ive, me-voar vad, ken henvelidiguez outhan nemet hounnez! Var guementse e varvaz ar spagnol.

Eur mestr mansoner a ioa en dez-all dirag al lezvarn. Tamal a reat dezhan e veze avechou cam he viziet. Ar mansoner en em zifen he unan dirag ar barner:

Tamal a rer din, emezhan, troiou cam! Me, aotronez, n'em eus ket izom da ober troiou cam evit beva. Me zo eur mansoner ha ne ket labour a vanc din. Me'm eus savet eur chapel nevez, daou di hag a so evel daou balez, pevar di all disteroc'h....

— Ia, eme ar barner, ha c'huac'h ialc'h gant ar pezh a ioa enho!

Eun dall a velet n'eus ket pell o vont a ru da ru, renet gant eur c'hi, evel m'oar boas da velet aliez. Hoguen an dall-ma dre ma zea varlerc'h he gui, a zave he benn da zellet er staliou, en doriou hag e prenecher an tiez. Eur bourc'hiz a evessez outhan, hag a deuas da zonzal e selle goal biz oc'h an traou, da viana evit eun dall.

Mont a reas d'he gaout, hag e lavaras dezhan:

— Em euz aoun, va den mad, c'hu n'oc'h ketdall.

An dall a vel ervad ne ell ket nac'h; hag a respont:

— Oh nan, aotrou, me vel sclear a drugare Done.

— Ha perag neuze e lakit-hu ar c'hi-ze d'ho ren?

— Me, aotrou, so o teski chas da ren tud dall! G. M.

Ar Gerant: AR. DE KERANGAL.
Kemper, moulet gant AR. DE KERANGAL, Moulet an Escopti.

FEIZ HA BREIZ,

KELOU A BEP BRO, HA KENTELIOU VAR BEP TRA,

DIGASSET BEP SUL

Da guement Christen a goms ar brezonec.

Eun Abonnamant d'ar Gazeten à goust:

Evit eur bloas.....	DAOU SCOUET.
Evit c'huac'h miz.....	EUR SCOUET.
Evit tri miz.....	C'HUEC'H REAL.
Eur gazeten ebken.....	DAOU VENNEG.

Ar bacamant à dle beza great araog caout ar gazeten.

ALIOU.

Ar scrijrou a ve c'hoant da lacat er gazeten a dleer da adressi oll d'an Aotrou MORVAN, Beleg e Kemper.

Ar pacamanchou a dleer da adressi d'an Aotrou SALAN, ebken. An abonnamant a guemerer e ti an Aotrou SALAN, librer, ru Kereon, e Kemper.

KEMPER, 28 Guengolo 1867.

An amzer ma vevomp enha so eun amzer e pehini e laker ar c'hiz araog peb lezen. Ar re en em emel da guentelia ar re all, n'o deus ken da lavaret nemet: *Bezit euz oc'h amzer*, da lavaret eo, bevit ervez ar guiziu a velit da heuilla. An doctoret a ro ar c'henteliou-ze ne ouzont ket hirroc'h euz al lezen gristen. Sant Paul evit guir a lavar: *Nolite conformari huic saeculo, diuallit d'en em ober dioc'h ar bed*, mes an doctoret ma comzan anezho a dro ar c'homzou-ze e gallec pe e brezoneg evelen: *Heuillit ar bed hag he c'hiziu*. Ha bez'ema ar c'hiz da drompla, da veza displeal, da ober gaou oc'h ar re all, da aloubi tra an nessa pa eller? Red eo hen ober, rag an hini n'her grafe ket, ne ve ket den. Hag ar c'hiz a zo da laza he vreur, da lamet he vuez digant eur mignon, eun amezeg, abalamour da eur guer dipitus, da eur gomz a zo displijet deoc'h? red eo hen ober, anez ne viot mui nemet eun den digalon, eun den a dle beza disprijet gant an oll. Hag ar c'hiz a zo evit ar vugale, evid an dud iaouanc, da ober fae var dad ha mam, d'ho disprijout, da veva ervez ho roll, ervez ho frouden hag ho fenn scanv, da vont eleac'h ma sonjont, ho c'habest gantho var ho moue, da fringal, da ebatal, da dremen gae ho iaouankiz, ho c'haera bloaveziou? red eo ober ar c'hiz anez ne vet ket euz he amzer. Hag ar c'hiz a zo da lacat he oll beadra e dillad caer evit en em ficha, en em glinna, evit ober euz ar c'horf, mar gueller, eun doare Doue a ve c'hoant da denna sell an oll varnezhan, a ve c'hoant da lacat da azeuli en eun doare bennag? red eo ober ar c'hiz pe ne vezo mui sellet ouzoc'h. Hag ar c'hiz a zo da goll ar re all ha d'en em goll he unan, evel a lavare guechall eur scrifagner paien, da zaotri ar re all ha d'en em zaotri he unan, da deleur ar re all er vouillen ha d'en em deleur er vouillen he unan? Evit beza euz he amzer eo red ober evelse. Hag ar c'hiz a zo da gaketal euz a Zoue hag euz he Zant, euz ar relijion hag euz ar re he heuil? Red eo hen ober mar sonjer tremen evit

tud a zoare. Ha kementse daoust da lezen Doue ha da lezen an iliz, daoust da guement a oufe sonjal ha lavaret ar re a zalc'h mad d'ar feiz ha d'ar relijion. Feiz, relijion, lezen Doue, lezen an iliz, petra eo an dra-ze evit an doctoret a hiro? Kementse a voa mad evit tud an amzer goz; mes evit an dud a vrema, red eo beza euz he amzer; ha setu ato an disean a zo e penn pehini euz ho c'henteliou. Ervez ho meno, Doue, an iliz hag an hini so en he fenn, a dle plega d'ar c'hiz, hag an Aviel a dle chench he lezennou ervez an amzer.

Goassa zo eo m'en deus lavaret Jesus-Christ he unan e chomje he gomzou ato, e tremenje an Euz hag an douar kentoc'h evit na vije chenchet eul lizeren pe eur poent epken euz he lezen. Ato hag e pep amzer, en desped d'an oll guiziu, e vezo mad al lealdet, ha droug an displealdet; ato e vezo eun dever evit bugalehenori ha caret tad ha mam; ato e vezo gourc'hemennet d'an den ober vad, ha difennet outhan ober droug d'he nessa; ato e vezo eun dever respeti ar relijion hag an traou sacr, respeti Doue hag he gomzou; ato e vezo guir ne eller ket servicha Doue hag ar bed var eun dro, hag an hini a garo ar bed, en em gollo gant ar bed. Caer a vezo eta lavaret: red eo beza euz he amzer red eo en em ober dioc'h an amzer, ma vever enha, ar c'henteliou-ze, dislavaret gant an Aviel, gant Jesus-Christ he unan, ne vezint morse mad nemet da douelli ar re a vezo diskiant avoale'h evit en em lezer da veza tromplet gantho.

Ar c'holera a zalc'h atao en Itali, hag an domder vraz a zo dre eno ne ro ket a esperans ec'h eanse c'hoas. Ar pezh a zo souezuz, eo ma crog ar c'hlenvet var ar meneziou eleac'h n'oa ket bet guelet morse a glenvet spegus, e keradenno distro eleac'h n'eus darempret ebet, eleac'h ma c'hespern bourgadennou darempredet, eleac'h ma tremen dalc'h mad tud elan couls ha tud iac'h. Ar c'hlenvet ne sco nemeur arme ar Pap. Meur a guær euz a Frans o deus casset the, guin, gourizou flanel ha traou all d'ar zouavet.

An tad santel en deus laket rei d'ar zouavet o deus kemeret kement a soursi euz an dud clan e Albano; da c'huec'h anezho, ar groas; da c'huec'h ha triquent, pep a vetalen aour. Ar c'hardinal Sacconi, a zalc'h brema e Albano leac'h ar c'hardinal Altieri, en deus desmet en eun hospital c'huec'h ugent buguel collet gantho ho zud dre ar c'holera.

An devosion evit an Itron-Varia ar Salet zo eat brema ive bete Rom. Ar Verc'hez n'oa ket bet henoret eno c'hoas dindan an hano-ze. Eur beleg a Frans eo en deus casset an devosion-ze di.

Ar c'harteriou euz an Itali pere ne maint ket dindan gouarnamant ar Pap, a zo berrontez ha naounevez anho, ervez cazenou ar vro. An dervezionrien, ar vicherourien a vanc labour dezho. Ar c'hlenvet ho sco, ha nebeud a zicour a gavont. A drugare Doue, e veler dre eno ive calz a dud vad, tud a reng huel hag a ro, ec'h eller lavaret, ho oll danvez evit beva ar re so en izom; hag a ia, kercoulz hag ar veleien, vardro an dud clan evit rei dezho an oll zicourou zo en ho gallout. Guellet ez euz hag o deus guerezet kement o doa evit he rei d'ar heorien, a ia nos deiz vardro ar re glan ha n'o deus mui netra nemet an dillad a so en dro dezho. N'em eus ket izom da lavaret ne deus nemet christenien vad hag a ve gwest da ober traon evelse.

Spagn. — Ekezer Lerida, eun itron iaouanc a Vrozaoz, eur protestantez, a zo bet recevet en ilis catolic en dervezion tremenet. Escop Lerida he unan eo en deuz he recevet, ha roet dezhi ar vadiziant, ar gouzoumen, (confirmation) ar gommunion hag ar briedelez.

Eun itron euz a Frans, o veza e Rom brema ez euz eur pennad, e devoa goulennet ha gallet caout dignemer digant ar Pap. Goulennet ha bet e devoa digantha n'ouspet gras, n'ouspet bennoz. Pii Nao a zavaz evit diskuez oa deut ar mare dezhi d'en em denna. Neuze an itron en em strincas d'he dreit:

— Tad Santel, emezhi, eur c'hras all am eus c'hoas da c'houlennet ouzoc'h, eur c'hras hag am eus c'hoant bras da gaout, ha ma n'he roit ket din, n'em bezo mui plijadur ebet.

— Petra eo ar c'hras-ze ta oc'h eus kement a c'hoant da gaout?

— Tad Santel, roit din ar boutou zo ganeoc'h brema en ho treid. — Hag hi d'he godel, ha tenna eur boutou all henvel tre oc'h ar re a ioa gant ar Pap, mes calz pinvidioc'h.

— Pii Nao, goude beza chomet eun nebeut souezet, a reaz eur musc'hoarz, hag a lavaras: Mad, va merc'h, a vezo great evel ma fell deoc'h, hag hen sini da c'hervel he vevel a gambr.

Pa voa deut ar mevel, e lavaras dezhan tenna he voutou digantha hag ho rei d'an itron, ha neuze lacat dezhan ar boutou all a ioa eno.

Pa en devoa ar Pap laket ar boutou nevez, ho c'have

diez. Sonjal a reaz e voa ato eur boutou nevez eun tamig diez da guenta hag e teuont da æssaat goudeze. Mes o veza en em lakeat da vale, e lavaras d'he vevel: Eun dra bennag so en unan euz ar boutou-ma hag a c'hlas din va zroad. Guellet petra eo.

Ar mevel en em laca da velet, a gav al ler c'hoezet en eun tu, hag a denn euz a voasc al ler eur billet a bemp mil scoet varnugent.

Missionou. — Caout a rer e liziri Breuriez ar Feiz, eur pennad lizer scrifet gant eur missioner hag en deus daou vloaz ha pevar ugent, hag a zo o prezeg an Aviel d'an dud gouez en Americ, en tu dioc'h an anternoz, ar pez a ziskuez e c'haller beva coz zoken er broiou gouez-ze eleac'h ma zeo gouscoude ker poanuz ar vuez.

« Goude eur veach hir ha tenn, eme ar missioner Fransez Puerz, ez ouz digouezet an derc'hent deac'h euz a vission Sandy-Lake, ha deac'h an tad Buch en deus roet dinar pez a zigasac'h evidhon, Aotrou'n Escop. Ar zicour-ze zo digouezet mad, rag clan oan, n'em boa ket a arc'hant na cazi tam da zibri. An anter euz ar pez oc'h eus digaset din am eus laket da baea va die, hag an anter all da brena bouet.

« Setu ama, e daou c'her, petra'm eus great epad va beach. Map ar c'hef braz a voa deut, pevar den gouez hag hen, d'am pidi da vont da brezeg ar feiz d'he veuriat (d'he garteriz). Staga a ris ar marc'h oc'h va zreinel, ha ez ejomp en hent, an tad Tomasin ha me.

« Ar veach a balas dec dervez; eun nebeut mad a leoiou or boa da ober, hag an hent a voa ouспен tri zroatad erc'h varnezhan. An avel a ioa cre hag a drouc'he ker ien oa. Red e voue deomp tremen peder nosvez er c'hoajou ha pemp e lochennou an Americanet so eno o tiscar guez. An noz diveza e voue tost din mervel. Ar c'hlas a ioa crog em oll izili hag e c'houlzaven eur boan scrijus.

« Mout a ellis gouscoude bete Sandy-Lake ha dioc'htu en em lekejomp da guelen hon tud gouez. Pemzeg dez e padaz ar mission, hag hon lochen a veze ato leun. Brema cazi oll e leveront ar pedennou, ec'h anavezont ar guirionezou kenta euz ar feiz, e canont canticou; lod zoken a v. ar ar c'hatekis. Badezet ou eus daou euz ar pennou ha meur a zen gouez. Kelennet ha badezet on divije oll dud ar meuriad, panefe ma teuaz an dienez da ober deomp en em denna. Hoguen roet on euz hor guer da vont adarre ep dale evit peurachui d'ho c'helen ha d'ho lacat e stad da receo ar vadiziant.

« Evelse mar deo bet poanuz hor beach, on eus bet ive eur blijadur bennag. Dreist oll ne ellan ket abcounac'hat ar joa am eus bet o vadezi eur vaouez coz deg vloaz ha pevar ugent, dare da vervel, hag ar c'hef braz euz ar veuriat, a ioa ive clan braz. Ho zapet em eus var dreuzou an eternite, hag ec'h esperan emaint hirio en env. O c'honit evelse eun ene bennag da Zone, e caf din ez oun va unan guelloc'h pourchasset da vervel... »

Turki. — An turc braz, a leverer, so deut mad ar gristenien dezhan, dreist oll abaoe ma eo bet e Pariz o velet an *Exposition*. Lavaret a rea e tifenje, en be stadou, ne ket epken ar gristenien, mes zoken ar relijion gristen. Hoguen an oll durket ne blij ket kementse ar gristenien dezho.

An tad Celestin, missioner er vro-ze, a voa savet en eur vag turc evit mont da enez Cos da rei ho fasc d'ar gristenien catolic so en enezen-ze. Ar sturier, ar vartolodet hag ar veachourien a ioa var ar vag-ze a voa oll turket. En em glevet a rejont oll da laza an tad evit caout he arc'hant. An oll a voar gouscoude ne vez ket pouner ialec'hi eur missioner. N'eus fors, eur guenneg bennag a ioa gantha, hag avoalc'h oa evit ober avi d'an durket. Unan a voue carguet da veza boureco, da laza an tad. Hoguen eun tam tabud a zavaz etre hema hag an durket all, abamour ne felle dezho rei dezhan nemet eis real evit he boan; hag epad ma voa an trouz-ze gantho, an tad a ellaz en em deleur er mor ha mout d'an douar var neun, hag a zaveteaz evelse he vuez. G. M.

BUEZ SANT VISANT FERRIER.

(EIZVED PENNAD).

Visant a n'em laca eta en hent evit mont da Constans, hag a erru e Toulous d'ar guener araok sul ar Bassion. Ken karet ha ken anavezet ez oa ar zant, ha kement e cariet hen c'hlevet o prezeg, ma tene an dud da lezel ho labourou a gostez, ar mistri scol da lezel ar vugale da vont er meaz evid hen sillaou pa vije o sermon. Ar burzudou a reaz goude e Carcasson hag e Castres, a roaz eun nerz hag eur pouez vraz d'he sermoniou. Ober a reaz dreist-oll eur miracl hag a velle beac'h o credi penefe ma-z-eo gouerantet gand hor Mam Santel an Iliz en deiz ma voue laket Visant e renk ar zent. Setu aman ar burzud-ze: eur c'hreg euz kear, troet he spered aboue eun tachadic amzer, a grogaz en he c'hrouadur, hag hen lacaz a dammon, evid ober, emez-hi, eur goan vad d'ar zant. Visant a zeaz eta da di ar c'hreg-ze, hag o velet izili ar paour-kez crouadur laket a bechou var an daol, a deu da scrija; mez leun a fisians e Doue, e ra sin ar groaz var ar c'hik hag an eskern-ze, hag e ro ar vuez d'ar buguel maro. Euz al Languedoc Visant a dremen er Bourgogn, e pez leac'h e resevaz digand ar roue Alphons eul lizer evid hen pedi da astafu da n'em gaout e Constans. Ar c'hardinal Sant-Anj ha pevar theolojian all a deuz de gaout di, evit goulenn he sclerijen var eun dra ken diez da c'houzout, ma n'en doa den c'hoaz euz ar c'honsil, guellet dont abenn d'he c'hompren. « Piou o ou-me, eme ar zant en eur leuskel daelou, piou ou-me, m'en euz kemeret kement a boan eun den a garg « huel da zont va beteg? An disterra c'hoant euz aberz « ar c'honsil, en dije va laket da vont d'ez-han euz ar « pen pella euz ar bed, ma vije bet red mont. Goude oll, « en em gavan souezet o velet kement a dud desket a zo « er c'honsil, o veza nec'het gand kennebeud a dra,

« n'eo ket an descadurez eo a vank da dadou ar c'honsil
« evit goulet scler er pez o deuz c'hoant da c'houzout;
« mez Doue, eb mar, ne fell ket d'ez-han sclerijenna ho
« daoulagad, rag m'en em gavont eno poulet gand ho
« vanite, ho lorc'h hag ho naon da glask meuleudi ar
« dud. » Ha goude beza comzet er guiz-ze, e laca ar
c'hardinal hag an dud a ioa deut gant-han, da velet scler
ar pez ne vellent ket araok. Caer en devoue roue Aragon
hen pedi da vont pelloc'h d'ar c'honsil, ne falvezaz ket
gant-han dre ma voue ervad e rankje beza euz tu Beneat,
petra benag m'a-z-oa ar gaou fall gant-han. Cousgoude
darn a lavar n'eo ket evit beza euz eun tu gand ar falz-pap
Beneat, eo e pede Alphons Visant da vont da Constans.

Elleac'h mont eta d'ar c'honsil, ar zant a guemer eun
hent control-beo; rag Jan V, dug a vreiz o veza hem
pedet, ez a da brezeg an Aviel er vro-ze. Cregui a ra en
he labour, e Naonet, epad ar c'hoareiz euz ar bloaz 1417,
hag e chomaz da brezeg dre ar vro-ze, e leac'h ma
tie echui he vuez.

Er memez bloaz 1417, an tadou euz a gonsil Constans,
a ziscleriaz Beneat XIII falz-pab, hag a anavezaz Martin V
evit guir pap. Beneat na falvezaz ket d'ez-han en em zi-
zoher euz he garg, daoust ar pez a ioa douget er c'honsil.
Mez Visant o velet kement-ze, a scrij d'ar pab-nevez
evit discleria d'ez-han he anaveze evid ar guir pap,
hag evit goulenn digant-han beza aotreet da brezeg rou-
antelez an env e Breiz-Izel. He c'houlenn a voue roet
d'ez-han.

Setu aman an doare ma veze Visant en he veachou
hag en he vissionou: ne gouske nemed pemp heur
horolaeh: an nemorand euz an noz a dremen o ped
pe o len ar scritur sacr. Da vintin ez ea d'al leac'h ma
tie prezeg: Da guenta e cane an oferen: goude e n'em
lake da brezeg: ha pa vije echui he sermon, evit plijadur
d'ar bobl niveruz a vije ato euz he heul, e roe he zaouarn
da boket, ha goude e rea sin ar groaz var an dud-clan
a vije digasset d'ez-han, ha dre ar sin ar groaz-ze, ho
faree peur-hessa. N'en devoa couz lavaret nemed eur
memez peder evit para an dud-clan. Ar beden-ze eo
ar c'homzou a lavare Jesus-Christ d'he Ebestel, hag a
guevomp er chabist diveza euz a aviel Sant Marc. Setu
hi aman: « an neb a gredo a raio traou burzuduz-braz: »
« sevel a raint ho daouarn var ar re glanv, hag ar re
« glanv a vezo diboaniet. » En eur echui ar beden-ze,
Sant Visant a lavare c'hoaz: « ra ma tujo Jesus, mad da
« Vari, mestr ha Salver ar bed d'ho Kenderhel er feiz,
« da rei d'e-hoc'h iec'hed er bed-man, hag evurusted
« er bed-all. » Debri a rea nebeud, ha c'hoaz ne zebre-
morse nemed pesked poazet en dour, rag emez-han, eur
rilijuz ne die ket ober cher-vad. Morse ne guemere
d'he bred nemed eur meuz: lacat a rea ato fors dour
en he vin: en eur guer, evit-han da veva pell euz he
gouent hag o vrevi he gorf gand al labour, ne c'henc'has
morse neira en doare da zebri ha da eva en he urs. Epad
daou-ugent vloaz e iunaz bemdez nemed d'ar sul. He
veachou a rea var he droad, eur vaz gant-han en he zour,
setu ar pez a reaz eb hean epad pemzeg vloaz; mez unan

euz he zivesker o veza deut da c'hoari da fall, e kemeraz eun azen evit mont euz an eil kear deben. Pa deue an noz, en em lake da gousket var eur guchen fagod pe var eun dornad colo. Adaleg he iaouankis beteg he varo, ne dremene dervez eb ed scourjeza he gorf gand eur gorden great a goulmou stard, ken evit mouga en he vouazied an tan euz an impurete ken evit clask an tu da ober d'he gorf ar pez a ioa bet great da gorf Jesus-Christ.

BODEUR.

*(Eur pennad-all divezatoc'h).***IANNIC A VIL VICHER.***Pe kentellion var calz traou hag a ve mad d'a c'houde.*

KENTA KENTEL.

— Tol splad mad, Yvonic, hag e vouezi eb dale penaoz implija goaderezet.

— Penaos ober' ta ?

— E pellearc'h en deus lavaret ar midisin lacaat ar goaderezet ?

— E meur a leac'h. Da guenta var choug he guil.

— Kemer neuze eun aoten pe eur sizail. ha troc'h eno ar bleo toussa ma c'helli, ar goaderezet ne grogont ket elleac'h ma zeus bleo, goudeze g'alc'h netta ma c'helli ar c'hroc'henn, ne garont ket kennebeut eur c'hroc'henn lous.

— Guelet' ta, lavaret e ve e vent dimezelled pe vugale re voummounet.

— Ia ret eo goalc'hi, saona, sec'hi, dreist-holl, mar deus beteno eur palastr bennac, mad e vezoken, goalc'hi gant dour suc'ennhan. Neuze e lamont gant ar c'hroc'henn evel eur pot' bihan gant eur guign rouantelez.

— Guelet em beus ho ija, ho lacaat en eur scudellad dour eur beradennic guin rus pe guin aegr enghan.

— A zo mad evit ho egazi, hag eur vech eet droug enho, e crogont evel pa vent counnaret.

— Penaos ho lacaat el leac'h ma ze gourc'hemennet ?

— Gant an dorn.

— Ia, hag elleac'h cregui e choug kil va zad e croguint e dorn he vab.

— Ma na peus aon na grogfent en da' zorn, kemer eun tam lian, gra gant d'a zorn ha gant an tam lian evel eur scudel, laca anezho er scudel-ze, ha dalc'hi var he guinou var kil benn da dad. Arabad eo avad goaska var ar goaderezet, rac neuze, elleac'h spega e claskent mont cuit, ret eo ho deffe eun tam frankis d'a drei ha da zistrei. Evit ho lacaat d'a gregui buhannoc'h, ho finzad dre al lian, pe glepa al lian gant dour aulen pe guin aegr.

— N'euz doare all ebet aessoc'h ? Aon am beus ne rafen ket mad er guisse. Ne garan ket guelet goaderezet, ne garan ket dreist holl santout anezho e vervi em dorn.

— Guelet em beus hag ho lake en eur veren c'houll, ha goude e pilent ar veren var he guinou elleac'h ma thient cregui. Eun doare vad, pell avad e vezont e spega. Aviziou ar goaderezet elleac'h cregui a en em laca d'a

bourmen en ho zy guer, evel tud hag ho deus amzer avoallac'h, aviziou all, ez eont d'a c'hourvez en eur c'horn, evel pa ho deffe c'hoant d'ober eur c'houssic araoc mont d'ho labour. Caer en deus an hini a zalc'h ar veren sellet ha caout c'hoant e crogfent, ne stagont ket. Henvel eo ous eur pesketaer : caer en deuz tol he iguen en dour, aviziou pesk ebet na grog.

— Setu ama penaos em beus guelet c'hoas lacaat ar goaderezet da staga. Eur medisin en doa goaderezet da lacaat d'a eun d'en claon var he guein. Petra raa ? Goalc'hi anezhan gant dour tom, hag he sec'hi gant un tam lian tommoc'h c'hoas. Goude e tol ar goaderezet en eur veren hanter leun a zour yen scorn, e laca ar veren-ze var he guinou oc'h kein an den clan, hep scuilla an disterra berad dour, ha pa velas e oa speg ar goaderezet, e savas enn tamic corn ar veren, evit losker an dour d'a ziredet cuit. Mar car ar goaderezet ar suc, e caront ive evit doare, an domder, rag buhan ha buhan, ec'h en em doljont var ar c'hroc'henn tom, hag e crogjont holl en eun tol.

— Mad avoallac'h, setu ama eun doare all guelloc'h c'hoas marteze, essoc'h da vihanna evit an dud divar ar mæz : ho lacaat d'a spega gant eun aval.

— Gant eun aval, Yannic ?

— Ia, gant eun aval, Yvonic. Ne c'heuz nemet kemeret eun aval, troc'ha eun tam divar he vec, cleuza anezhan, ober anezhan evel pa lavarfen eur scudel, tol ar goaderezet er scudel-ze, ha lacaat anezhi var he guinou el leac'h merket evit ar goaderezet. An dour avalou a zispilij cals dal lonedigou-ze, hag evit tec'het diounthan, ec'h en em dolont var croc'henn an den.

— Me gredfe, Yannic, hennez a ve evel a livirit, an doare essa ha guella. Var ar mæz, e caver peurvuya, avalou, ha neuze eun aval a heller d'a droc'ha evel m'a carer, rei a heller dezhan ar furm a garer. E velse, gant eun aval eo e fell din lacaat goaderezet d'am zad var choug he guil. Ne ket avoallac'h, ar midisin en deus lavaret lacaat ive diou pe deir goaderezet dezhan var he gof gar. Merket en deus dinn al leac'h, ne ket ledannoc'h evit eur pez dec guennec, ne ket huelloc'h nag izelloc'h, nag a gleiz nag a zeo, mæz eno dres e ranker ho lacaat. Penaos ober ?

— Pephini en deus he izign. Setu ama penaos e reer peurvuya. Cregui a reer er voaderez dre he lost gant daou viz, he derchel a reer a zispil a zioc'h al leac'h m'a tlee cregui. Evel ma ranker goaska var he lost evit he derc'hel, e reer poan dezhi. Ar voaderez ne sonj nemet en em denna deus ar boan-ze ha ne speg d'a vad nemet pa vez squis o c'hourin oc'h an daou viz he dalc'he. Ret eo caout calz amzer ha calz poan, evit lacaat diou pe deir da bega er guisse.

— Deskit d'in eta eun doare essoc'h ha buhannoc'h.

— Da guenta laca eun tam paper pe eun tam lian teo var he gof gar, gra eun toull en tam paper pe en tam lian-ze, drez azioc'h hag e ledandet al leac'h merket d'ar goaderezet, kemer eur veren evel am beus lavaret d'ide'hoas,

laca ar goaderezet ebars, pil anezhi var he guinou azioc'h an toull græt er paper pe el lian, hag evel ma ne deus en dro dezho, tam croc'henn noas nemet dirag an toull, e speguint holl eno. Gra guelloc'h c'hoas. Kemer eun aval, troc'h anezhan a dreus e daou hanter, cleuz an daou dam, ha gra eun toull en tam var gorre. Laca ar goaderezet enghan, serr anezhan, ha diazez anezhan var he benn, var ar leac'h merket. Evel ne garont ket an dour avalou, e poanont da dec'het dre an toull hag e spegont er c'hroc'henn a gavont dindan.

— Kement-se zo mad evit he gof gar, eno zeus frankis, hag an hini zo da lacaat dezhan var he c'harvan, biken na hellin en ober.

— Eo, eo, ne ket diessoc'h. Bet out eur vech bennac e ker'het butun.

— Meur a vech.

— E petra e veze lakeet d'id d'a zigas d'ar guer ?

— En eur c'hornic paper.

— Mad, gra unan er guis-se gant paper calet, gra en he vec moan eun toull braz avoallac'h evit ma hello ar voaderez mont dreizhan, laca ar voaderez enghan, stang ar penn bras ha dalc'h anezhan var he benn bihan oc'h ar garvan. Ar voaderez o velet eo stanket outhi ar penn bras, a dec'ho dre ar penn bihan, ha gavo kig ar garvan hag a bego enghan.

— Netra essoc'h, Yannic, eur c'hrouadur bihan a raffe an dra-ze, ha me o sevel em zao evit mont d'ar guer.

— Gortoz, gortoz, eme Yannic souezet oc'h va guelet o sevel em zao, n'out ket desket avoallac'h c'hoaz.

Y. P.

*(Eur pennad-all eur vech-all).***PARDON AR ZALET.**

(EIL PENNAD.)

Lavaret or beuz eur gerig war an dere'hent ha war ar vintinvez euz ar pardonyou ordinal. E zeom brema da gomz euz ar pardaez.

Heur ar gousperou a zeu. Ar c'hleyer, lakeet e brall, a c'halv ar gristenyen d'an ofis. Eun nebeudig epken a gompren e ma mouez ar Mestr braz oc'h o gelver hag a ya d'an iliz. An darn vrasa ne dosteont ket : lod n'ed int ket deuet c'hoaz diwar o lein ; lod a zo dre ar parkeyer o c'hoari c'hartou pe dre an hentchou o c'hoari galoch ; lod oc'h efa dre an hostaliriou ; lod all o troidellat war an dachenn, o sellet ouz ar marvailloù, o c'hoari milikâz, o tenna gan ar fuzul goad....

Eun amzer a zo bet, ha dioc'htu pa gommeuse, neket epken an oferenn, mes ivez ar gousperou, ar blasenn a zeue da veza sioul. An hostizyen oll a baouez da roi da efa, peb c'hoari ha pep appalateraz a heane, ar merseryen hag ar gwerzeryen frouez a c'holoe o marc'hadourez ha ne werzent mui netra ken a vize fin d'an ofis. An oll dud a feiz en o zouez, eb kuitaat o zraou, a denne o chapeled pe o leor hag a gemmere perz en ofis

divin, hag ar bayaned da viana a ree peoc'h. Mes hiryo n'ed er mui-ker skrupuluz ha ken devot.

Da fin ar gousperou ar prosesion a ya er mæz hag ar blasenn a zioula eun tam. Mouez ar ganeryen a c'holoe, eur pennad, peb trouz all. An oll, dre ma tremen ar prosesion, mezeper eur c'hos lakez benag, a denno zok : eun elvenn feiz a jom c'hoaz e kreiz an dud-ze.

Ar prosesion o veza distroet d'an iliz hag ar gousperou achuet, ar gwir gristenyen 'em denn neuze d'ar gær : pardon an iliz, pardon Doue hag e zent a zo klozet.

Mes pardon ar bed, pardon Paol-goz ne ma ket c'hoaz war ar poent da finisa. Ar jabadao a gendalc'h en dro d'al lec'h santel epad ar rest euz an deiz hag aliez pell en noz, pa ne vez ket lakeet urz. Ped pec'hed a vesventi, ped pec'hed louz, ped blasphem, ped malloz, ha ped pec'hed all ne vezo ket gret epad an abardaez, hag ar pennad noz-se !

Setu aze lodenn ar bed en eur pardon, ne lavarad ket en oll bardonyou, mes e calz anezo, dreist-oller pardonyou muia brudet. Ha c'hoaz mar goulennit digan Fanch pe Ber, pere a zo bet er pardon : « Ac'hanta ! « Fanch, pedare pardon a zo bet duze ? » — O ! eme Fanch, « eur pardon kaer tre ! Enno e voa eur bobl, « eur môr a dud ! Enno, ma c'hredit, an hostizyen, ha « re-all o deuz greet arc'hant ! Enno a zo kouezet ofran- « sou ! Ba, ba ! Doue epken a voar.... ! »

Distroom brema d'ar Zalet ha gwelom pedare pardon a vez enno ive.

Pardon ar Zalet n'ed eo nemeur envel ouz ar pardonyou all. Enno ar bed n'en deuz lodenn e-bed, oll eo evid Doue hag evid ar Werc'hez Vari.

Da genta, dere'hent ar pardon (18 a viz gwengolo), e vez ivez eur c'henta gousperou. Ar zolanite-ze ne luff nemeur dre an niver braz a dud 'em gavenn-hi : eun nebeudig beleyen epken hag eun nebeudig tud fidel a zeu d'ar gousperou-ze. Mes, en eskem, er mæz euz ar chapel, nag a dost, nag a bell, ne welit ive netra euz a gemment a ouffe poanya ar c'hizidika daou-lagad, tinel pe tant e-bed, hostiliri e-bed, c'hoari e-bed, stalig e-bed....

Antronoz (19), kercent ha teir heur anter ez euz tud o c'hortoz digori ar chapel. Beleyen a zigouez eb dale, 'em laka er c'hadoryou-koves, ha neket labour a vank d'ezo.

An oferenn genta a gommans da bemp heur nemed kart, hag ac'hanno da unneg heur anter, kreistez, ez euz oferennou eb distag e-bed, diou, teir aliez er mæz amzer. Er bloa'-ma, da zeiz ar pardon, ez euz bet 21 oferenn er chapel, nebeutoc'h eged an ordinal : kustum a zo da veza pedir, pemp war-uzgent.

Ar c'hovesionou a gendalc'h ivez epad ar vintinvez, adaleg 4 heur hag araog beteg 11 heur, 11 heur anter, en tu-all. 8, 9 c'hador-goves a vez savet, hag epad ar vintinvez neket tud a vank en dro d'ezo.

Er pevarzeg oferenn lavaret ouz an aoter vraz ez euz

komuniet. Beza ez euz bet, er bloa'-ma, 800 komunion hag en tu-all. An niver-ze war-dro a vez beb bloaz.

Setu aze penaoz e reer pardon ar Zalet. Di ne ya ket a bardoneryen da glask marvailhou, da welet reuzyou, da lonka bannac'hou; di ne ya nemed ar re o deuz c'hoant da ober o devosion, da zizama o c'houstians dre eur govesion vad, da reseo an Aotrou Doue, da drugarekaat ar Werc'hez Vari, da c'houlenn grasou. Petra a lavarit-hu war gemment-se? Ha n'ed eo ket enno ar gwir feson da ober eur pardon mad, en doare ma fell da Zoue ha da Vari, da blijout d'ezo ha da denna war-n-om o grasou hag o bennozyou? Mar karffe ar Vretoned ober evel-se o oll fardonyou, me a gred d'in ne teuffe morse ar c'holera na goallennou all d'or bizita.

Beza ez euz tud hag a zo souezet e reseffe ar belle-rined grasou braz ha niveruz er Zalet, grasou evid ar vuhez-ma, grasou evid ar vuhez da zont, grasou a heb sort hag evit 'o o-unan hag evid ar re ma pedont evit-'o. « Penaoz! » eme-z-'o, « ha n'ed eo ket ar memez Gwer-« c'hez Vari a honorer e lec'h-all evel er Zalet? Perag « eta e c'hoarveffe kemment a draou burzuduz er Zalet, « pere ne c'hoarvezont ket e lec'h-all? Ar Werc'hez « Vari, ha n'ed eo-i ket ker mad ha ker galloudeg e « lec'h-all evel ma eo er Zalet, ken douget da ober « burzudou e lec'h-all evel er Zalet? »

D'an dud souezet-ze me a responto. Ia, gwir a leverit, ar Werc'hez Vari a zo ker mad ha ker galloudeg e lec'h-all evel ma eo er Zalet, hag a rafte burzudou e lec'h-all, en oll bardonyou all, e pere eo pedet hag henoret, evel ma ra er Zalet. Eun draig epken a zo red evid se. — Petra: ober d'ar fals pardoneryen ha d'ar re a fournis d'o dizurzou, hostizyen ha re-all, chom er gær: rag o dizurzou, o lec'hejou, o amzevosion eo a vir ouz ar Werc'hez Vari ne ra-i ar burzudou a c'houlennit.

E pardon ar Zalet n'ez euz netra evid ar bed, netra evid an diaoul, euz nemed evid Doue hag evid ar Werc'hez Vari. Da bardon ar Zalet, eur wech c'hoaz, ne ya nemed tud dispozet mad kalz pe neubeud; ar re dispozet fall a jom er gær. Evel-se, ar rederyen, ar c'hlaskeryen marvailhou ha plijadurezon, ar pennou avelet, an dud a zizurz, drogach ar pardonyou na yeont ket war dro: rag er Zalet n'ez euz netra evit-'o, netra n'o zenn di. Enno hostiliri e-bed, appalater e-bed, c'hoari e-bed. Setu perag ne welot enno morse den mezo e-bed, neb dizurz e-bed; ne glevot enno nag bopadenn, na sikan. An oll drouz a glevot eo mouez ar paour hag ar c'hlasker o c'houlenn an aluzenn. Er mæz evel en iliz peoc'h, devosion, pedennou, skouer vad e peb feson, setu oll ar pez a gavot e pardon ar Zalet.

War dro teir heur e vez ar gousperou. Gonde ar gousperou, sermon ha benediction ar Zakramant, ha setu achu toat. Eur c'hard heur gonde ne gavot mui eur c'hristen war dro ar Zalet, nemed eunan benag a vez chomet er chapel da ober e zevosion.

Hogen, ha ne gomprenit-hu ket brema perag e c'hall ar Werc'hez Vari ober er Zalet burzudou, pere ne ra ket

e lec'h-all? Er Zalet ez eo e gwiryonez henoret, pedet, meulet gan ar belerined vad; e pardon ar Zalet Mari na wel nemed traou pere a ra d'ezi joa, levez, plijadur; netra euz a gemment a dremen enno, ne ofans Doue na ne ra poan d'ezi. Penaoz neuze ec'h ouffe-i revuz eun dra benag da bedennou ar belle-rined, mar-d-eo mad an dra a c'houlennont, talvoudeg evid gloar Doue hag evid selvidigez o oneou?

E kalz euz e fardonyou all, er c'hontrol, mar-d-eo ar Werc'hez henoret eun tam dre oberor ha pedennou ar bardoneryen vad, ez eo c'hoaz muioc'h poañfret dre zizurzou, pec'hejou hag amzevosion ar fals pardoneryen. Penaoz neuze e vez-i e goùd da ober burzudou e lec'h-yeou-ze?

Klevit ama. Pa o peuz c'hoant da gaout eun dra benag, eur c'hras, eur blijadur digan eun den, memez digan eun den mad, mad dreist bord, ha mont a rit-hu d'e gavout, pa vez-'en en himor fall, droug-kontant evid eur rezon benag? Nann. Gortoz a rit ken a vez deuet en himor vad: rag gouzout a rit ez eo esoc'h, kalz esoc'h kaout eun dra digan eun den en himor vad, eged digan ar memez den en himor fall.

Penaoz ive, va mignoned, e sonchfec'h-hu kaout grasou digan ar Werc'hez Vari er pardonyou-ze, e pere e reer kemment evid lakaat anezi da veza droug-kontant, da veza en himor fall, mar-d-eo permetet lavaret se!

Evel-se, Bretoned, chanchit mod da ober ho pardonyou; grit ma n'en devezo mui ar bed lodenn e-bed enn-o; grit ma ne vezo en ho pardonyou nemed evid Doue, evid ar Werc'hez Vari, evid an Eled hag ar Zent, ha Doue, ar Werc'hez Vari, an Eled hag ar Zent a jancho ive mod en ho kënver. Neket gallont na c'hoant a vank d'ezo da ober vad d'eoc'h, da rei d'eoc'h ar zikourou a c'houlennit, mes c'hwi eo a vank da ober ar pez a zo dleet evid se. E-lec'h henori Doue hag e Zent en ho pardonyou, kalz ac'hannoc'h a zizhenor anezo; e-lec'h ober plijadur d'ezo, kalz ac'hanoc'h a zeu d'o foanya. Chanchit eta feson da ober, hag an traou a yalo gwelloc'h.

Gonezit penoz ar pardonyou a zo gouelyou pe solanteou santel, ha neket foaryou, marc'hajou, assambleou euz ar bed. Ma o peuz c'hoant da welet marvailhou ha da ober ho reuzyou, it da festou ar bed da welet ha da ober anezho. Mes ne rit ket euz ho pardonyou festou evel re ar bed. Ma n'o peuz ket a zevosion, na zit ket d'ar pardon, chomit er gær ha lezit ar re-all da vont

Ra ne vezo en ho pardonyou dizurz e-bed; ra ne vezo greet enn-o pec'hed e-bed, netra fall e-bed. Ra vezo gwelet an oll bardoneryen o vont d'an ofisou, o pidi gan fervor, o tostaat, muia ma c'hallint, ouz sakramant ar binijenn hag ouz ar gomunion. Na zit ket war dro an appalaterien, na zit nemed an neubeuta ma c'hallot war dro an hostizyen, hag e teskot anezo evel-se da jom er gær ha da na pas dont da gaillari ho pardonyou. Pa vezo deuet ho pardonyou da veza gwir bardonyou, pardonyou devod, pardonyou santel, neuze Doue, ar Werc'hez

gloaruz Vari hag ar Zent a raio burzudou enn-o, a raio d'eoc'h an oll grasou hag an oll zikourou a c'houlennont digan-t-'o. Evel-se bezet greet. AN ERMIT.

LEVR AL LABOURER.

Penaoz e kresk ann niver euz ar gwenan, ha penaoz e ve lamet ar mel digant-ho, hep ho laza.

Ar gwenan a zo gwerc'h: ha digant eur vestrez Na gollont ket ho foan o klask ober al lez. Ne d'ed nemet ar vamm hag ar gorerezed, A vag ar re vihan, hag ho laka er bed.

Ar wenenen eta ne ra war ann douar, Nemet clask war ar bleun hag ar mel hag ar c'hoar; Kempenni ann tiez, ober ann dirennou: Evit-hi ema holl ar boan, al labouriou.

Alies e weleur he diwaskel freuzet Gand ar spern, gand ann drez, ~~gwelet~~ daou-hanteret; Dindan he bec'h pounner o tonet da vervel; Ken doughet vel m'ema da zestum coar ha mel!

Mes ive pa dosta ann deizioù euz ar goan, Gand aoun na ziouerint, holl en em hastont buan, War ar gorerezed d'en em deul a vanden, D'ho lakaat d'ar maro war dreuzou ar rusken.

Baleit, mar kirit, e pevar c'horn ar bed, Nep lec'h ne gavot tud hag a gar hor roued, Kement evel ma kar ar gwenan ho rouanez. Ind he mir e pep lec'h, hag enn ti hag er mez. Keit ma vev ar rouanez ne d'int holl med unan. Mes kennavo d'ar peoc'h, pa varv: kenti-kentan, Ind a c'hwast holl ar mel, a rog ann dirennou.

Ar vamm a zo bepred e penn al labouriou. Ar re all war-n-ezhi a zalc'h ho daoulagad, Hag a ia e pep lec'h war he lerc'h a vagad: Ind he doug war ho c'hein, he harp ouz ho c'horfou, Hag a varv enn he lec'h e-kreiz ar brezelioù.

Evid eosta ha koar ha mel ar wenenen, Bez'ez euz hag he mong e gweled he rusken. Ah! tec'hit, tec'hit buan, calonnon didruez! Pellait ann tan, ar soufr, he lezit e buez! Pa ve eat da wenan holl ar prened bihan; Pa vo leun ar rusken; eun dilost euz ann han, Pa en em skign ar blaz euz ar mel tro-war-dro; Daou pe tri miz araok ma konez erc'h war ar vro; E-pad ma cavont c'hoaz digor meur a vleunen; Savit gand ho coutel al lae euz ar rusken, He goloit dioc'h-tu gand eur rusken neve, Ha skoit gand ho tourn euz ann traon d'ar c'horre. Vit ma pignint buhanoc'h demeurez ar goz rusken, Gand eunn torchad lien, skignit eur vogheden; Kentre c'houi ho gwelo o vont kenti-kentan Euz ar rusken izel er rusken ~~Aluelan~~.

L. Delaigier 57. M. B. A. G.

Hano ar Zent evit ar Sizun, ma...

- DILLUN, 30 Guengolo. — Sant Jerom docteur euzian ilis.
- DIMEURS, 1^o Here. — Sant Remi, Escop.
- DIMERC HER, 2. — An Alez gardien.
- DIZIQU, 3. — Sant Melaar, merzer.
- DIRGUENER, 4. — Sant Fransez assiz.
- DISSADORN, 5. — Sant Mauris, abate.
- DISSUL, 6. — Seitecvet sul goude Pantecost, Goulet ar Rozera.

Abostol ar zut.

Me ho ped eta start, me pehini a so chadennet abalamour da Zoue; da ren eur vuez din euz ar stad da behini oc'h galvet; da veza e pep tra humbl, dizrog, gouzanvus; d'en em c'houzaon an eil eil eguilb gant carantez; da veza var evez evit miret an unvantez a sperc'hada guenderc'hel al liam euz ar peoc'h. Ne doe'h oll nemet eur c'horf e Jesus-Christ, n'oc'h eus nemet eur spout, evel ma zoc'h galvet oll d'ar memes tra ha ma oc'h euz ar memes esperans.

Ne deus nemet eur Mestr, eur feiz, eur vadiziant. Ne deus nemet eun Doue, a so tad dian oll, a so dreist an oll, a guemer seursi euz an oll, a jom, enomp oll. Beuniguet ra vezo da viken.

Lizer Sant Paul d'ar Evezianet iv. 1^o 10^o 11^o 12^o 13^o 14^o 15^o 16^o 17^o 18^o 19^o 20^o 21^o 22^o 23^o 24^o 25^o 26^o 27^o 28^o 29^o 30^o 31^o

KEBBIER.

Allezvar, (cour d'assises) evit an tri miz tremenet, azigoro, e Finister ar (7?) a viz here. An Aotrou Derom, alier e lezvaru Roazon, a vezo en he beun; evit ha zicour en devezo an Aotrouez Delavaud ha Nouet, barerrien e Kemper.

Scrifa a rer deomp euz a Landivisiau eo 730 luhaine ket 500 lnr epken eo o deus savet beleien ar c'hantonze evit ar zouavet a ane ar Pap.

En daouzeg dervez kenta a vis Guengolo ez ens bet nouspet tan goall e Finister; e Peumerit, Plouneour-Trez, Plomodiern, Plounevez-Lochrist, Plogoff, Scrignac, Sant-Ian ar biz, Kemperle, Landeda, Plomeur, Plouider, Ergue-Armel.

An ed a zalc'h da vont var gueraat, eme gazetenn ar Meziou, gouscoude e teu calz ed euz ar broiou all da Varseil. Guellet a rer ez eo bet, e meur a garter, bhanoc'h c'hoaz an eost evit na zontet.

Ar c'holera so brema ive en Algeri. Croguet eo bet da guenta en Escopti Constantin hag hirio ema en Escopti Alger.

A drugare Doue ne ra ket calz a zistrui.

An arc'hescop coz euz a Sens, an Aotrou Jolly, so hanvet chaloni a guenta reng a Zant Denis, evit delc'her leac'h an Aotrou Coquereau.

Euz a di ar missionou diaveas bro ez eus diblaset c'huec'h missioner da vont da brezeg an Aviel. An Aotrou Marais, a Escopti Anjer, evit ar Su-Tchuen, tu ar c'huz-heol; an Aotrou Farges, a Escopti Montauban, evit ar Su-Tchuen, tu ar sao heol: an Aotrou Landes, a escopti Rodez, evit ar Su-Tchuen, tu ar sao-heol; an Aotrou Dutroyat, a escopti Grenobl, hag an Aotrou Jamet, a escopti Lyon, evit ar Su-Tchuen, tu ar c'hreis-deiz; an Aotrou Coupat, a escopti Clermont, evit ar Su-Tchuen, tu ar c'huz-heol.

E Rom e tesker lenn ha scrifa da 9,911 paotr. Var an niver-ze n'eus nemet 3,806 hag a baefe; ar 6,105 all a scolier evit netra. Lenn ha scrifa a zesker da 10,983 merc'h. 2,765 anezho a bae, an 8,188 all so scoliet evit netra. Evelse etre potred ha merc'hed e scolier 20,864 buguel; 6,571 anezho a bae; 14,293 so scoliet evit netra. Ha ne ket e Rom ema bro an denyalijen?

Lavaret a rer ez eus brema e Londrez, e Bro-Zaoz, eun niver braz a listri, o tont euz a du an anteroz, carguet a ed, ha dreist oll a guerc'h, evit digas e Frans.

Ar Iankeet euz an Americ a zo lod anezho potred dispar. Daou anezo a bourmene n'eus ket pell en eur jardin digor d'an oll. En em gaout a rejont da vont, unan dioc'h pep penn, en eun alez voan; ne voa ket a frankis da vont an eil ebioù d'eguile ep trei divar an alez. Hoguen pa voant digouezet an eil gant eguile, nicun ne felle dezhan trei. Chom a rejont eno d'en em zellet. Nicun ne lavare guer, na ne finve. Boda a reas tud en dro dezho, ha pa gomansaz ho divesker da skuiza, e c'houlenjont cadoriou, hag e voue kerc'het dezho. Tremene a reaz eun heur, div heur, deut oa an noz, hag an daou-ze a jome eno ato. Unan a c'houlennas digas eun daol dezhan, hag eguile ober eun dinel aziouthan.

Pa scrifet kement-ma, e voant eno evelse abaoue daou pe dri dervez, e lakeant digas dezho da zibri, hag e recevent ho mignonet evel pa vijent en ho zi. Ne ouzon ket hag hi o deus c'hoas otreit trei an eil divar eguile.

Setu ama ive daou zaoz hag o deus great eun dro all, pe kentoc'h a zo bet great eun dro all dezho. E kær X... e voa enn dez all eur c'harroz hanvet omnibus o vont da gas beachourien d'an hent houarn abenn ma tigouesje an trein. Ar gar a so eno eur pennadig mad dioc'h kær. Ar c'har a zerviche da omnibus a voa eur c'hombot enha, ha teir itron o doa goulennet ha dalc'het evitho ar penn araog. Hoguen pa voa tost ar mare da vont en hent, daou zaoz iaouane en em gavaz, hag evel ma edont araog ha ma carient ho æz evel ma car peurvuia ar zaozon, e pigujont er plasou a zalc'het evit an itronezet. Ar re-ma pa errujont a bedaz an daou zaoz da zisken, mes an daou zaoz ne reant van. Rener an omnibus a grie ive o la-

varet dezho o doa an itronezet guir da gaout ar penn huela-ze euz ar c'har. Eur Serjant polis en em gavaz ive hag a reaz he c'hallout o clasc ober dezho disken.

Hoguen poan gollet. An daou zaoz ne finvent ket. Mont a reat da guerc'hat an archerien, pa deuz eur zonch da rener an omnibus.

— Gortozit, emezhan d'ar veachourien all, me ia da baca an daou labous-ze.

Setu-hen o prenna an or varnezho hag oc'h ho destum eno evel en eur gaouet. Neuze e tistag he guezeg, hag e stag anezho oc'h eun omnibus all a ioa goullod er c'hardi. Ar veachourien all a bignaz oll didrouz en omnibus-ma hag an daou zaoz a jomaz en ho c'haouet.

Ne ve ket æz lavaret pegnement e crie, e c'hourdrouze, e counnare an daou zaoz. Red e voa dezho, emezho mont en hent gant an trein a iea da dremen. Hoguen den n'en devoa truez-outho. Red oue dezho chom eno ken na zistroas rener an omnibus euz an hent houarn, hag an trein a ioa diblaset pell a voa. Pa vouent losket da vale o devoue c'hoas da c'houzaon an hu hag ar c'hoarz euz an dud a ioa bodet eno.

Eun Aotrou braz euz a Scos a roe diguemer eun dervez da eun Aotrou braz all euz an Alemagn. O veza he gaset er menezioù da zellet oc'h he vandennou chatal a voa eno o peuri:

— Han! emezhan, pet loen a gaf deoc'h so aze?

Evel ma chome eguile da zonjal; « Bez'em euz aze, emezhan, tremene deg mil loen corn.

— Bah! eme eguile, n'eus ken? Me'm eus tremene deg mil messaer o tional va jatal corn!

Eur gascon a lavare da eur mignon dezhan hag a voa euz a Varseil: en hor ster-ni (ar Garon) eo ker stang ar pesket ma paker anezho gant rouenvou ha zoken gant an dorn.

— Peuh! eme eguile; e kichen Marseille ez euz eur ster ha n'eus banne dour enhi, n'eus nemet pesket tout! — Ar gascon a recevaz eul lizer euz a Vourdel an eil euz ar miz, hag an hini en doa he scrifet a voa en em dromplet hag en doa merket an trede. Han! eme ar gascon d'he gamarad, potred evelse so en da vro? Setu aze eul lizer hag a zo deut hirio, ha ne vezo ket scrifet ac'han da varc'hoas!

— Eur pezh caer! eme eguile; ma vije deut euz a Varseil, oa digoezet deac'h! G. M.

PRIZ AN ED.

KEMPER. — 21 guengolo.		POINT-NABAT. — 19 gueng.	
Priz ar c'hant lur.		Priz ar c'hant lur.	
Guinis....	46 lur, 84 c.	Guinis....	47 lur, 50 c.
Segal....	44 lur, 04 c.	Segal....	42 lur, 50 c.
Eiz.....	9 lur, 48 c.	Eiz.....	10 lur, 25 c.
Ed-du....	7 lur, 94 c.	Ed-du....	9 lur, 69 c.
Kerc'h....	9 lur, 97 c.	Kerc'h....	40 lur, 23 c.
Avalou-douar	5 lur, « c.	Avalou-douar	4 lur, 50 c.

Ar Gerant: AR. DE KERANGAL.

Kemper, moulet gant AR. DE KERANGAL, Moulter an Escopti.

FEIZ HA BREIZ,

KELOU A BEP BRO, HA KENTELIOU VAR BEP TRA,

DIGASSET BEP SUL

Da guement Christen a goms ar brezouneec.

Eun Abonnamant d'ar Gazeten a goust:

Evit eur bloas.....	DAOU SCOUET.
Evit c'huec'h miz.....	EUR SCOUET.
Evit tri miz.....	C'HUEC'H REAL.
Eur gazeten ebken.....	DAOU VENNEC.

Ar bacamant a dle beza great araog caout ar gazeten.

ALIOU.

Ar scrijou a ve c'hoant da lacat er gazeten a dleer da adressi oll d'an Aotrou MORVAN, Beleg e Kemper.

Ar pacamanchou a dleer da adressi d'an Aotrou SALAUN, ebken. An abonamant a guemerer e ti an Aotrou SALAUN, librer, ru Kereon, e Kemper.

KEMPER, 5 Here 1867.

Nag hen a zo scrijus stad eun den en deuz ancouna-c'heat Doue hag he zeveriou evit ren eur vuez direol pa vel ar maro o tont trum d'he zamma, pa vel eur goal glenvet evel ar c'holera o tont da gregui enha! Nag hen a zo scrijus beza var dro eun den evelse, scoet gant ar c'hlenvet, pa deu d'en em rei d'an dizesper eleac'h en em drei oc'h Doue! Setu petra zonjer o velet traou evel ar pezh a vercomp ama varlerc'h.

E kichen kær Albano, eleac'h ma en deuz ar c'holera great kement a zistruch, ez oa o chom, en eur maner, eun den pinvidig, eun den estren, da lavaret eo, deut di euz eur vro all. An den-ze a veve en dizurs, ancounac'heat Doue ganthan. Eur mevel en doa kemeret euz ar c'harter, a ias kuit en eur lavaret ne felle ket dezhan chom etouez tud ken divez, tud hag a reaz ar brezel da Zoue, ha ne allent ket mancout da denna varnezho goaligner an Env. Guir en doa lavaret ar mevel mad-ze. C'huec'h dervez goude edo ar c'holera er maner, daoust da guement a ioa great evit miret outhan da vont beteg eno. En eur pennad dervez e samm eur mevel all a voa en ti ha diou vaouez deut gant an aotrou euz he vro.

Eun dervez, mintin mad, e tremene eur beleg ebion ar maner; mont a rea a brez e kær da gas sicour d'ar re glan. An aotrou, euz he brenest, her guel, her galf, a lavar dezhan a bep seurt traou divalo, a ziskuez dezhan zoken, a leverer, eur bistolen, o c'hourdrous tenna varnezhan. Ar beleg a iez er maner. Caout a reaz an tri gorf maro astennet er jardin. An aotrou en doa ho stlapet eno o sonjal en em zizober evelse dioc'h ar c'hlenvet. Hoguen ar reuzeudig a ioa taguet he unan. Euzuz oa he velet. An eonen a deve euz he c'hinou, hag en em ruilla, ha neza a rea he oll izili var leuren he gambr.

Ar beleg a vele ervad ne daje ket a bell, hag her pede da zonjal en he ene. An aotrou a iude. « Nan, nan, emezhan, ne fell ket din mervel! Re iaouang oun, re binvidig, re curus! Kea alesse beleg d...., labous a voal

guelou. M'em eus da c'halvet evit rei sicour din ha ne ket evit va c'hofez.... »

Neuze ar reuzeudig a loske leoudouet a enep Doue, hag a guinnig he ene d'an droug speret evit lezel he vuez gantha!

Ar beleg keaz a bede hag a gomze brao outhan. Mont a reas betekinnig he vuez da Zoue evit saveter ene an den-ze, pe evit ma vije roet ar iec'het dezhan. Hoguen ne voue ket roet he c'houlen dezhan, hag an den difeizze a varvas divar greiz he leoudouet.

Ha ne deo ket scrijus kementse? Setu ama eun all ha ne deo ket ken ankenius comz anezhan.

Eun tad a famill, eur pec'her caledet, a voa abaoue tregont vloaz oc'h ober ar brezel da Zoue ha da Vikel Jesus-Christ. Dont a ra ar c'holera; skei ha samma a ra he c'hreg hag he vere'h an eil varlerc'h eben. Hen he unan a ioa elan d'ar guele. He bried a varvas da guenta goude beza recevet he zacramanchou evel eur gristenez vad ma zoa. Araog mervel, pa edo prest da dremen, e pede evit ma tistroje he fried oc'h Doue. He merc'h a ioa var al leac'h, hag o clevet he mam oc'h ober ar beden-ze e lavaraz: va mam, pidi a rit evit ma tistroio va zad; me a guinnig va buez da Zoue evit kementse.

Teir heur goude, ar vere'h, hag hi iac'h pesc bete neuze, a voue scoet gant ar c'hlenvet, en em daolas var he guele, hag a varvas o tivoask poan griz.

Kerkent speret an tad a voue selereat. Goude beza great bete neuze ar seouarn vouzar oc'h monez Doue, o tistroaz en eun taol; en em lakeas da scuilla daelou puill ha da grial o c'houlen eur beleg.

Ar c'henta beleg a voue cavet a voa eun tad cabucin euz a Albano. Ar c'hlanvour en doa diaraog clasket caout buez an tad-ze. Pa her guelaz, hen anavezaz, hag e pocas d'he zac o c'houlen pardon outhan.

« Va breur, eme ar c'habucin, trivac'h vloaz zo em eus pardonet deoc'h hag e pedan evidoc'h. »

Doe a roas d'ar pec'her-ze amzer da ober pinijeu er bed-ma; rag goude m'en doa bet ar c'hras da receo he zacranchou; e distroaz e iec'hed.

Kær Rom a zo enbi brema o chom daou c'hant pemzeg mil pemp cant trizeg ha triuguent den. Vardro pemp mil muioc'h evit a voa varlene. Var an niver-ze ez eus seis mil pevar c'hant nao den a iliz, hag ar re-ma so pemp mil ha seiz ha daouguent anezho relijiuzet.

En nebeut itronezet catolic' euz ar Stadou-Unanet en Americ a voa deut da Rom evit ar gouelioù caer so bet eno en han-ma. Araog mont kuit, evit diskuez d'an Tad Santel ho feiz hag ho c'harantez, o deus roet dezhan eur baniel brodet gantho evit ar zouavet. An Tad Santel en deus roet ar baniel-ze d'ar zouavet an trivac'h euz ar miz-ma.

Tour. — Er sizun tremenet, eun demezel a Vrozaos, savet ha maguet e relijion ar vro-ze, e deus kuiteat an errol etre daouarn person parrez Sant Moris. An demezel-ze a gred e deus bet ar c'hras da zistrei oc'h Doue ha da apaout ar virionez, abalamour petra bennag ma voa protestantez, e carie gouscoude ar Verc'hez Vari hag e doa devosion evithi. E guirionez penaus caout eur zantimant christen bennag, penaus cridi e Jesus-Christ ep caret he vam? Ha Mari so ker mad!

E kær Malin, e Beljic, en em zestum bep bloaz, eun nebeut zo, an dud gouezieca euz a douez ar gatoliked, evit comz euz ar relijion, euz an ilis santel, euz an dangerou e creis pere en em gaf hag euz ar moienou d'he difen oc'h he enebourien. Er bloa-ma ez euz adarre eun assamble eno. Prezeguennou euz ar re gaera so bet great gant tud euz ar re zesketa so anavezet hirio. Scrifet o deus d'ar Pap evit renta testeni d'ho unvaniez gant cador Sant Per. An Tad Santel en deus scrifet dezho ive evit meuli ho feiz ha rei courach dezho da zifen an ilis santel.

En eur guær all, hanvet Genev, ez eus bet ive eun assamble. An dud difeiz, an dispac'herien a voa en em zestumet eno evit fonti, emezho, ar peoc'h. Dispac'herien o lacat ar peoc'h er bed l'ia, mes ar peoc'h so bet eno eo ive ar peoc'h a eller da c'hortos dioc'h tud evelse; da lavaret eo, an assamble zo bet freuzet tost da vad a daoliou dorn. An drong speret, evel a ouzeur a bell zo, a ra evel ar marmouz, a glasc ober evel an Aotrou Doue, hoguen he zonzou a ia ato e mogued. Pa glasc guenn e teu du gantha; pa gomz a beoc'h, ne laca nemet trous; freuz, dispac'h, safar; eurus c'hoas pa ne laca ket a zistruch.

Setu ama eul loden euz a lizer hon Tad Santel d'ar gatoliked vad assamblet e Malin.

HOR BÜGALÉ GUBH,
« Gant calz a levenez on eus recevet ho lizer pehini, dre ar c'homzou zo enha; dre an doare ma zeo scrifet, a ziskuez ez eus buez ha feiz en ho touez. Ar feiz epken a ell diskuez deoc'h cador Sant Per o veza ato treac'h

da bep gallout evithi da veza diners; ar feiz epken a ziskuez deoc'h an agador-ze o chom bepret stard en he za e creiz ar goassa baron-amzer, o teleur sclerijen a bep tu dezho, o teskit ar virionez d'an oll, o tifen e pep loac'h al lealdet. O velet ar gristenien vad oc'h en em zestum, ec'h anavezit; ez euz en iliz unvaniez, buez ha sclerijen; o velet ar peza-ra ar Brovidans evit souten an iliz, ec'h anavezit euvad ne vezo discaret morse; ha kementse eo ato ar feiz eo hen diskuez deoc'h.

« Meuli a rit ar bopl a Rom abalamour ma zeo douguet evidomp, abalamour ma teu dre he furnez da zizelei trubarderez an dud fallac'h ha da zerra dezho ho guinou. Ni ive a ro deoc'h ar memes meuleudi, rag cridi a reomp e viot ato ive douguet evit cador Sant Per, hag e teuot ato gant prez da zenti oc'h he gourc'hemennou, da kenilla he aliou ha da zifen he guirion.

« Mar gra an testenion-ze a unvaniez ar c'halonou plijadur deomp, e tleont ive ober enerez da enebourien an iliz, ho lacat da veza leutoc'h gant ho mennozion fallagr, da viana ar re anezho o deus c'hoaz eun tam calon bennag.

« Ep mar oc'h eus labouret calz evit kementse, ha caer eo ar recompans zo oc'h ho kedal, mar gallit distrei en hent ar binijen hag ar zilvidiguez eun niver braz euz ar re zo dallet gant an errol, mar gallit dont a benn da lacat da ren var ar bed guirion ar relijion, hag ar justis. Evit m'o pezo ar c'hras-ze, e roomp deoc'h hor bennoz. »

HISTOR ZANTEL

TENNET DIVAR LEVR ANN EXOD.

(UGHENTVED PENNAD).

Menez Sinai. — (EXOD XIX.)

Tri miz goude ma oe leuet Israël er meaz euz ann Ejipt, ann trede deiz euz ar miz, e teujont e gouelec'h Sinai, hag Israël a steignaz eno he deltoù, rag enep d'ar menez.

Ha Moizes a bignaz da gavout Doue; rak an Aotrou a c'halvaz anezhan divar ar menez, hag a lavaraz d'ezhan: Ann traou-ma a leverot da di Jakob, hag ho diskleria a reot da vugale Israël. Livirit d'ezho euz va ferz: Guelet hoc'h euz hoc'h-unan petra em euz great d'ann Ejiptianed; penaoz em euz ho toughet evel ma toug an Er he laboused var he ziousaskel, ha penaoz em euz ho kemeret evit ma viot d'in. Mar silaquit eta va mouez, ha mar mirit va c'hevredighez (va alianz), c'houi vezo d'in evel va zra, va bobl choazet etre ann oll boblo: rak ann onar holl a zo d'in. Hag e viot evid-oun eur rouantelez beleien, hag eur vroad tud santel.

(Ann Er, labouz roeal, o toughen he evnedigon var he ghein a verk enn eun doare kaer meurbed karantez Doue e kenver he bobl. An Er, pa fell d'ezhan chench plas d'he laboused, pe deski d'ezho nijal, a gustum ho doughen nann gant he bao na gant he vek, evel ma ra al loened al, mes ho c'hemer a ra va he ghein. Gouzout a

ra ec'h helle ann den ober drouk d'ezho gant tennou lu-zill pe gant tennou bir, hag en em laka etre an tennou hag-hi. Ar maro na hello ho zizout nemet a dreuz d'he gorf-he-unan. Oh! Karantez dispar!

Ar bobl a Israël a skeudenne e pep tra ar gristenien a dlie dont var ho lerc'h. Setu perag e lavare Sant Per d'ar gristenien: c'houi zo eur veleghiach roeal. Di lavarout eo, rouaned ha beleien; rouaned dre ma z int goestlet da Zoue evel Jezuz-Krist, hostivou beo, santel, hetuz, (agreabl, ha prest da rei ho buez evit he c'hoar, evel m'ho deuz great ar verzerien.)

Moizes a zeuz, hag o veza dastumet ar re gosa euz ar bobl, e tanevellaz d'ezho ar c'homzou en devoa gourc'hemennet ann Aotrou lavarout d'ar bobl. Hag ar bobl a respontaz: Ober a raimp kement tra en deuz lavaret ann Aotrou. Ha moizes a gassaz komzou ar bobl dann Aotrou-Doue. Ha Doue a lavaraz d'ezhan: Ma! bremaik e teuin d'ho kavout e kreiz eur goabren deval, evit ma klevo ar bobl ac'hanou o komz ouz-oc'h ha ma kredo ac'hanoc'h da virkiken. It diouc'h-tu da gavout ar bobl, sanctifiit-hen hirio ha vare hoaz gant lidou ar c'hlanadur. Ra voalc'hint ho dillad, ha ra vezint prest a-benn ann trede deiz. Rak d'ann trede deiz e tiskenna ann Aotrou dirag ar bobl holl var venez Sinai.

Tro-var-dro d'ar menez e lekeot harzou ouz ar bobl, hag e leverout d'ezhan: Diouallit na bignac'h var ar menez ha na douchach zoken ouz ann traon anezhan. Pion bennag a doucho ouz ar menez a varvo evit he boan. Daouarn an dud na douchint ket ouz ann den-ze, mes lazet e vezo a daoliou-mein, pe treuzet a daoliou bir. Pe loen pe zen e vezo, ne choumo ket he vuez gant-han. Pa goumanso ann drompill seni, ra bignint var-zu ar menez.

Moizes a ziskennaz divar ar menez da gavout ar bobl, hag e santifiaz anezhan. Ha pa ho doe gouelec'het ho dillad, e lavaraz d'ezho: Bezit prest a-benn ann trede deiz, ha na rit netra goestl da derri ho klanadur.

Dija e oa deuet ann trede deiz; ha diouc'h ar mintin pa oa braz ann deiz, e teuz az gurun da drouzal, al luc'bed da skedi, eur goumoulen deo meurbed da c'holoi ar menez, hag ann drompill da zoun kre ha skiltruz. Hag ar bobl, pehini a oa er c'hamp, a grene gant ann aoun.

Ha pa en doe Moizes ho zentet euz ar c'hamp evit dout var arben Doue, e chomzont e traon ar menez.

Hoghen menez Sinai a voghede a bep tu, dre ma oa diskennet an Aotrou var-n-ezhan e kreiz an tan; hag ar moghed a zave anezhan evel diouc'h eur fourn vraz, hag ar menez holl a oa spout he velout. Soun ann drompill a zeue a-nebeut da nebeut krevoc'h, ha da bep taol hirroc'h ha skiltroc'h. Moizes a gomze ha Doue a respounte outhan.

Ann Aotrou-Doue a ziskennaz eta var venez Sinai, var veg ar menez, hag a c'halvaz Moizes el leac'h huella. Ha pa oe pignet eno, e lavaraz d'ezhan: Diskennit c'hoaz eur veach, ha livirit mad d'ar bobl ar pez am euz difen-

net, gant aoun na felle d'ezhan tremen dreist ann harzou evit guelout ann Aotrou, ha na varfe eun niver braz anezho. Goude-ze c'houi bigno d'am c'havout, hag Aarou gan-ehoc'h. Mes ar veleieu hag ar bobl ne dremenit ket ann harzou, ha na bignint ket da gavout ann Aotrou gant aoun n'ho lazfe.

Moizes a ziskennaz eta da gavout ar bobl, hag a ziskleriaz d'ezhan a-nevez urzou Doue. Ha pa oe distroet var ar menez, Doue a roaz d'he bobl ha d'ar bed holl hezek gourc'hemenn.

(Klevet hon euz ann Aotrou Doue o lavarout d'ar bobl bete diou veach: Na dremenit ket enn to all d'ann harzou. Bez'ez euz aze eur ghetel evit eleiza da dud enn amzeriou-man. Karont a rafent kavout Doue hag e velout er bed-man; karont a rafent poella pe comprenn misterion ar feiz a-barz kredi hag heulia peun da benn lezennou ann Aviel; ann harzou a fell d'ezho da dremen, hag e kavout ar maro enn ho diskredou.)

Ann arvest spontuz-ze e kreiz pehini e felle da Zoue rei he c'houe'hemennou d'ann dud, a oa evit planta doue he zonzanz eun ho c'halonion; rag doujanz Doue eoderou pe koumansamant ar furnez. O velout ann tan, al luc'hed, ar gurun o lont enn he rack, ho divje eur skeud euz he c'halloud hag euz he c'hoar. Lavarout a rafent enn-ho ho-unan: nia na zentomp ket, heu hor fiastro; mar sentomp, eo goestl da zigas he bromessaou da vir ha d'hor c'harga a bep seurt madou. Eur gurunen pe poanion garo en deuz da rei d'eomp; ha gant aoun na helle ket he justiz ei ar gurunen, e laka dirag hon daoulagad, tan, moghed, kurun ha luc'hed, portred ann ifern, evit ma teac'himp gant spout diout-han. H.

BUEZ SANT VISANT FERRIER.

(NAVED PENNAD).

Sant Visant, caer en doa labourat, ne c'helle ket dont a-benn d'ober ar peza c'houlennet digant-han, ar pez en lacas da guemer pemp beleg-all, euz ar menez urs-gant-han, evid rei d'ez-han an dourn. Ar veleien-ze voa Per Rayna, Ian Beaupre, Raphael Cardo, Jeffroi Blannes, ha Per Cerdan, pemp rilijuz ken brudet dre ho descadurez evel dre ho santelez; lavaret a rear zoken e roaz Doue d'an daou diveza anezho, ar galloud d'ober mi-raclou. Dre ma vije bepred eur bobl tud var he lerc'h, n'euz forz e pez leac'h ez ea, darn evid, ober pinijen ha darn all evit caout an eur d'he c'hlevet o prezeg, ar zant a deuz abenn da ober pep tra en eun doare derret. Ervez he izom, e kemere beleien var he hent, ha pa vije erruet e leac'h ma lie ofon eur pennadic evit rei eur mission, e roe da bep unan euz ar veleien-ze he labour: darn a vije laket da govez, darn da ober catekis, darn da gana canticou, ha darn-all, evit an ofisou da veza caeroc'h-aze, da respout an oferen. Caret a rea meurbed guelet cana gand lid ha gand solanite an oferen-bred, ar pez hen lekeaz da lacat ober eun ogrou-vian hag euz da zouguen evit mont gant-han, n'euz fors e pez leac'h

toe'h ; ma raje an holl evelse, hep dale e vije cavet avoallac'h a voaderezed er goaziou hag er steriou.

— Evidon-me a heulio ho euzul mad.

Ken a vo, Yann e, ha bennoz Doue deoc'h, mall eo dinn mont d'a glask goaderezed d'a lacat d'am zad.

Y. P.

Hano ar Zant evit ar Sizun-ma.

DILLUN, 7 Here. — Sant Bruno.

DIMEURS, 8. — Santez Berc'hed, intañvez.

DIMERC'HER, 9. — Sant Deniz hag he guenverzerien.

DIZIQU, 10. — Sant Fransez Borgia.

DIRGUENER, 11. — Sant Soter ha Sant Caius, pabed ha merzerien.

DISSADORN, 12. — Sant Jorj, merzer.

DISSUL, 13. — Trivac'hvet sul goude Pantecost. Gonel MAM DOUE

An Abostol hirio :

Me (ar furnez eternal) am eus pouezet bleun a c'huez mad evel ar vinien, ha va blenn a zoug frouez a c'hloar hag a honor. Me eo mam ar garantez caer, an doujans, ar skiant hag an esperans santel. Enhon ema ar c'hras evit peb hent hag evit pep guirionez ; enhon ema peb esperans evit ar vuez hag ar vertus.

Deut oll davedhon c'hui pere oc'h euz eur c'hoant bras d'am c'haout, ha kemerit ho coalc'h eus va frouez. Rag va speret a zo dousoe'h evit ar mel ; n'eus direu vel ebet ker c'hoec ha va heritach.

Va hano a vezo souch anezhan da viken. Ar re am debr, o devezo naoun adarre, hag ar re am ef o devezo adarre sec'het. (d. l. e. a c'houlennno c'hoaz.) An hini am silaou, ne vezo ket mezekeet ; ar re a labour dreizhon ne bec'hint ket. Ar re am ro da anaout d'ar re all, o devezo ar vuez eternal.

Levr an ecclesiastic XXIV. 23.

G. M.

AR MESSAER BERT-LE.

(KENTA PENNAD.)

Setu ama eur Messaer hag a zo digouezet gantha en he vuez darvoudou, troiou hag a eller da lavaret burzudus. Goude beza bet Messaer, pe mar kirit dioualler denved en he guenta bloaveziou, Bertele a dremenat dre veur a stad ha meur a vicher, bete dont da veza roue, hag a deuas da eubui he vuez massaer evel ma en doa he c'homanset. Ar re a lenno, kement-ma eveziant, a gavo ama meur a guentel.

An hini en deus savet ar pennad scrit-ma a ioa eat da veachi er menezioù a zo etre ar Frans hag ar Spagn, hag a c'halver Pyrenees. Eun dervez ma edo o vale er menez, e voa tom an heol da scaota, hag en em gave skuis. Mont a reas da glasc eun tam dizheol evit diskuiza, hag eno ne zaleas ket da gousket. Divar greiz he gousk e santas var he dal ha var he c'hinou eun dra bennag leiz ha ien, hag e savaz en eul lam. Eur c'hi eo a voa en em laket da

lipat he vizach dezhan ; unan euz ar chas braz ha drougze a gas ar vessaerien gantho d'ar menezioù evit ho zicour, da ziquat ho loenet hag evit cas ar bleiz divar ho zro.

Ar c'hi a voue strafuillet o velet an den-ma o sevel arafoll hag en em lakeas da harzal. Oc'h he glevet e tire-das pemp pe c'huec'h ki all cre ho mouez ha lem ho dent, hag ar beacher kez a vije bet lonket gantho ep bara na c'hoalen panefe ma edo ar vessaerien a dost ha ma teujont buhan da gas ar chas divar he dro.

Ar beacher neuze en em lakeas da c'houlenn calstrau oc'h ar vessaerien-ze divar benn ho bro, ho buez, ho bevans, ho guizioù. Hoguen d'an darn vuia euz ar goulennoù-ze ne respontent nemet :

— Goulennit digant ar roue !

— Ar roue ? Piu eo ar roue-ze ?

— Eun amezeg deomp hag a zo bet roue.

— Hag e pelec'h ema hen brema.

— Sellit, ema duhont ; ha mar oc'h eus c'hoant da glevet traou nevez, hennez a lavaro deoc'h. Guelit, ema erru ama.

An den a dostea ouzomp, eme ar beachour, ne voa gantha na baz roue en he zorn na curunen var he benne. N'oa ket zoken eur bluen oc'h he dok. Dillad gloan roue a voa gantha evel gant ar vessaerien all. He zae a ioa taconet ha toull var an ilinou. He dog, bet du guéchal, a ioa dent da veza couls lavaret guenn, kement oa bet glibiet gant ar glao ha sec'het gant an heol.

Gouscoude o velet he vale, he zrem, an ear anezhan, em bije lavaret dioc'h-tu oa hen ar roue ma vije goulennet diganen pehini euz ar vessaerien a ioa lezhanvet evelse.

— Sell, roue, eme unan anezho, setu aze eun Aotrou hag a c'houlenn diganeomp-ni traou ha ue anavezomp ket ; te avad a vouezo he respont.

Bertele ha me a azezas var al leton. Red eo ha ma vijen bet pell cousket, rag pardaez oa, hag an domder a ioa eat ebou. Goude beza clevet meur a dra gantha, ez ean da c'houlenn outhan perag hen hanvet roue, pa lavaras din : Ema an noz o tout ; re zivezad eo evit ma zafac'h da glasc lojeiz e leac'h all. Ar gliz ha frescadurez an noz a rafe ive droug deoc'h ma chomfac'h dindan an amzer ep beza boas dioc'h hor menezioù. Deut ganhen d'am lochen ; ma n'oc'h eus ket a herez evit dont d'am zoul-ti, e cavot enha eun tam tan, eun nebeut plous da c'hourvez varnezho ; eur banne leaz, eun tam fourmach, ha mar-teze eur bastel kig moc'h da zibri ; ar pez am euz a guinniguin deoc'h a galon vad.

Ne c'hortozis ket lavaret diu diou vech, hag ez ejomp d'al lochen. Lochennou ar vessaerien er menezioù-ze n'eus ket implijet calz a ijin evit ho zavel. Tronjennou sapin anter garreet ha lakeat an eil var e ben gant tamou kinvi da stanca eleac'h ma chom goascou, setu eno ar moguerion.

Eun nebeut plouch dister, euz ar re a c'halver crotten, a zervich da doen. En diabar n'eus ket hano a arrebeuri.

Eur planken bennag so-laket da ober taol ha da c'horren ar pez ne ve ket a c'hoant da lezel var an douar. E creiz al lochen, eur mean bennag oc'h ober oalet evel e tiez ar voutaerien ; en eur penn eub nebeut colo evit gourvez da dremen an noz ; eul lestr keguin hag eur benvec bennag, setu eno oll.

Ar vessaerien all a voa deut ive var hon lere h'd'al lochen. Coan a voue debret en eun halabad, ha neuze e voue lavaret ar pedennou ; rag ar vessaerien-ze zo christenien vad. Ne garfent ket mont da gousket ep beza pedet Doue, ep beza he drugarekat euz he vadoberon. Oc'h ho gulet o-pidi Doue, ker caloneg, e sonjen hag e lavaren buzin va man : Mad, ar re baoura, ar re o deus bet nebeuta digant Doue, eo ar re soursiussa d'he drugarekat ! Nag a dud pinvidic zo hag o deuz ho oll ezamanchou, hag o deus pep tra ervez ioul ho c'halon, ha ne brijont ket zoken sonjal en dorn madeleuz a ro dezho an traou-ze oll gant kement a larguentez !

Re a voguet a ioa d'al lochen-ze evit ma c'haljen-me cousket enhi. Bertele ive n'oa ket eat da c'hourvez evel ar re all. Lavaret a ris d'ezhan :

— It eta da gousket, rag c'hui, goude skuisder an deiz, oc'h euz ezom da eana. Me a ia er meaz da zellet oc'h ar stered a dle beza ker caer da velet er menezioù-ma, hag evit me guli. Doue da veza crouet traou ker burzuduz azioc'h hor penn.

— Me a gousco div ezatoc'h, eme Bertele ; ni zo boas da goll meur a bennat nosvez.

— Mad, eme ve, eontit din eta ar pez so digouezet ganeoc'h en ho puez.

— Eleac'h conta deoc'h, ez an da lenn, rag laket em eus dre scrit ar pez so digouezet ganen.

Mont a reas da eur c'horn al lochen, hag euz a zindan scolpat ha calstrau all e tennaz eur picol caier. Neuze ez ejomp er meaz hag ec'h azesjomp e kichen an or. Bertele a lakeaz ar c'houlennou a voa deut gantha oc'h eur gojen, hag evit miret na vije mouguet, he difenne gant pal he zorn oc'h an ezen hag oc'h an eskel-groc'hen a c'hourruje dre eno. Lenn a reas bete teir heur dioc'h ar minin, ha biscoas n'em oa bet muioc'h a blijadur o clevet, den o lenn. Da deir heur oa echu gantha. Neuze me bignas var heg unan euz an tuchennou so eno da zellet oc'h an heol o sevel, ha Bertele a iegas da ober eur voreden. Pa ziskennis divar ar menez oa tost da greis-deiz ; Bertele a ioa eat d'ar penn all ar menez gant he zenvet. Er bloas varlerc'h ez is di adarre en esper he velet ; hag e voue lavaret din e voa maro eun nebeut derveziou a voa, coezet e goasc ar rec'hil o clase savetei he vuez da eur zaoz a ioa da vervel eno ep gallout dout kuit.

Bertele en doa lavaret din : pa blij va fennat scrit d'eoec'h, cassit-hen ganeoc'h, ha lakit he voulla mar kirit, ha neuze e root din eul levr m'ullet eleac'h va c'haier.

Pennat scrit Bertele eo eta a roer ama, hag al lenner a ello sonjal eo ar messaer he unan a glevo o conta ar pez a voa bet digouezet gantha en he vuez. G. M.

(Eur pennad-all euz vech-all).

KOBBEDR.

Hanoiou ar Jureel evit al Lez-Varn e miz Here.

AN AOTRONEZ :

Gustav Briot (de la Mallerie), euz a Benhars.

Per-Ian-Loiz Ar C'boz, euz a Huelgoat.

Emil Guillou-Pennaroz, euz a Zouarnenez.

Hubert Melon, euz a Guerhaes.

Theodor Gobillard, euz a Guemperle.

Ian-Vari Floe'h, euz a Blonevez-Portzay.

Fransez Ar Braz, euz a Viellann.

August Guillot, euz a Vrest.

Ian Bourles, euz a Bleyben.

Joseph Baron, euz a Blouziry.

Ian-Mikeal Ar Boru, euz a Bleyben.

August Causeur, euz a Loperhet.

Lois Furic, euz a Loqueffret.

Fransez Ar Scauff, euz a Landiviziau.

Ian-Jakez Dulaurent, euz a Guemper.

Adrien de Grainville, euz a Heuivic.

Joseph Odeye, euz a Audiern.

Joseph Bourcer, euz a Gastel-Paol.

Frederic Biron, euz a Vrest.

Ian-Per-Mari-Charles Milin, euz a Castellin.

Adolf Le Jeune, euz a Vrest.

Jakez Ely, euz a Landerne.

Loiz-Eujen Jacq, euz a Zouarnenez.

Nicolas-Fransez Calloc'h, euz a Vrest.

Alexandr Cloarec, euz a Lanmeur.

Ian Ar Meur, euz a Blouegat-Moysan.

Benjamin Dubois Montmarin, euz a Zaoulas.

Ian-Loiz Paisant, euz a Bont-n'Abat.

Eujen Jegou du Laz, euz a Zirinon.

Ian-Herve Poullaonec, euz a Drebanu.

Camil Ar Bihan a Bennele, euz a Sant-Martin.

Camil-Victor-Joseph Hubert de la Hayrie, euz a Guemperle.

Clauda-Olier Landal, euz a Zouarnenez.

Ludovic Dault, euz a Blouescat.

Per-Aimabi Holley, euz a Vrest.

Ian-Fransez-Mari Audran, euz a Guemperle.

Evit delec'her leac'h ar re a vancse :

An Aotronez Alfons Govin, Adolf Porquien, Elize Gellion, Fransez-Eozen-Mari Levec, ho fevar euz a Guemper.

Adaleg ar pemzeg beteg an guent a viz guengolo euz eus bet adarre tan-goall : e Plounevez-Lochrist, e Cleder, e Spezet, e kichen Landerne, e Castel, e Plouhinec.

Mar deus nebeut a avalou er Finister er bloa-maj er Morbihan hag e c'antenoù all ez eus kement anezho mator ar guez dindan ho beac'h. Anguinis du ive so ker caer, ma n'eus ket a zonch da veza bet pell zo kement a golo hag a c'hreun.

E Lanniliz ez eus lakeat c'huec'h foar nevez. Ar foarion-ze a vezo d'ar c'henta merc'her euz ar miz evel ar foariou coz.

Cazeten Bourdel, o comz euz an dud hir-hoalet, a lavar :

En derveziou tremenet e comzet euz a eun den hag en deus daou vloaz ha cant. An den-ze a zo guinnidig euz an Normandi, mes pell so ema o chom tost da Vourdel. Brema ez euz eun nebeut bloaveziou e varvaz eun Normand all, eur pesketaer, d'an oad a zeg vloaz ha cant. An den-ze a ioa bet demezet peder guech, hag en doa bet daou grouadur varnuguent. D'an oad a gant vloaz e sonjas kemeret, neket eur vatez da guemeret soursi anezhan, mes eur pempet pried.

Caout a rer evelse bep en amzer unan bennag hag o deus bevet calz hirroc'h evit ar re all. Er bloas 1801 e varvaz e Russi eur zoudart coz hag a ioa bet er vrezel hanvet brezel a dregont vloas. Tost da zaou c'hant vloaz en doa.

Samit Mungo, euz ar Scos so maro da bemp bloaz ha nao ugent.

Peter Czarten, euz an Hongri, da bemp bloaz ha nao ugent.

Herri Jekins, euz a Vrozaos, da nao bloaz hag eiz ugent.

Job Surrington euz an Norvej, da eiz ugent vloas.

Thomas Dam, euz a Vrozaos, da bemp bloaz ha seiz ugent.

Thomas Parr, euz a Vrozaos, da zaouzeg vloaz ha seiz ugent.

Drakenborg, euz an Danmark, da c'huec'h vloaz ha seiz ugent.

Jokat Essingham, euz a Vrozaos, da bevar bloaz ha seiz ugent.

Jord Wunder, euz an Alemagn, da c'hueteg vloaz ha c'huec'h ugent.

Douglas Gurgan, euz ar Sued da c'huec'h ugent vloas.

Mittelstad, euz an Alemagn, da bemp bloaz ha c'huec'h ugent.

Maria Williams, euz ar Russi, da bemp bloaz ha cant.

Lod euz ar dud coz-ze a ve menr a dra souezus da lavaret divar ho fenn.

Surrington a ioa chomet mad gantha lie anaoudeguez hag he ollskianchou beteg he varo. Lezel a reas var he lerc'h eun intanvez iaouang hag eur vanden vad a vugale. Ar c'hossa euz ar vugale-ze en doa tri bloaz ha cant hag ar iaouanca deg vloaz ha pevar ugent.

Thomas Parr en doa bevet e Brozaos dindan nao roue. Eul labourer douar oa, ha d'an oad a dri bloaz ha cant e rea c'hoaz pep labour, bete dorna. D'an oad a zaouzeg vloaz ha seiz ugent e voue galvet gant ar roue da Londrez. Eno e voue roet dezhan da zibri bouet ha n'oa ket boaz diouthan ; ar pez a voue penn abeg d'he varo, ervez testeni ar vedisinet hen digoras.

Douglas Gurgan a zemezas d'he bemp bloaz ha pevar ugent, hag en devoue eis buguel. Mittelstadt a zemezas d'he zeg vloaz ha cant, hag en devoue ive meur a grouadur.

Maria Williams a ioa cant vloaz ha n'e doa c'hoas collet dant ebet. Neuze e collaz unan hag e savaz eun all en he leac'h. Da dri bloaz ha cant e collaz eun dant all, hag hema a zavaz eun all en he leac'h ive. — Setu aze peadra da ober avi da guen aliez a zen a veler ha n'o deus dant mad ebet araog ho antercant vloas.

An ed ne oufe nemeur manout da veza ker er bloama. Gouscoude an ed du, so caer, da viana er c'harterma, hag an amzer so mad evit he zestum.

Ervez Cazeten ar Meziou, mar deuz e calz karteriou tud divar ar meaz o clase mont da jom e kaer, hag eleac'h an euruset a glaskent eno ne gavont nemet dienez ha trubuil, ez euz ive karteriou all a beleac'h e veler bandennou tud o vont d'ar broiou estren, avechou d'ar penn pella euz ar bed.

Hag ar re-ma a zigouez goassoc'h gantho c'hoaz evit gant an dud divar ar meaz o vont e kaer. Eleac'h an danvez, an zezamanchou a esperent da gaout, ne gavont nemet naounegeuz, goal zarvoudou ; neuze en em roont d'an dizurz hag en em gollont corf hag ene. Ar penn abeg a guementse eo ma zint diskiant avoalc'h evit silaou eun doare coureterien a deu d'ho zrompla ha d'ho guerza o rei dezho da gridi e valeint er broiou all var an aour hag an arc'hant, ha pa vezont eat n'o deus ketato a golo da c'hourvez varnezho.

Ar memes cazeten a lavar divarhenn al labourou douar a so brema var ar mare da zigueri : An hini a labour doun he zouar a so ato suroc'h da gaout ed ha traou all evit an hini a labour baz. Pa vez glaoeier, an douar a ef guelloc'h an dour pehini ne jom ket da ober pri var gorre, pe da veuzi ar c'hounideguez ; pa vez sec'hor, griziu an ed hag ar frouez all a gaf ato douar beo, a ell suna leisder euz an douar doun. Setu penaoz e tal al labourou doun hirroc'h evit al labourou baz eleac'h ma vanc an ed kerkent ha ma teu eun tamig re a c'hlebor pe eun tamig re a zec'hor.

Lavaret a ra c'hoaz ar gazeten-ze d'al labourerien douar e c'hounezet oc'h hada a linen. Cals nebeutoc'h a had a doler en douar. Var an had a esperno eun tiog oc'h ober he c'hounideguez c'hoan epken, e chomo gantha peadra da brena eun haderez, pe eur bevec da hada.

Eun tam discar so bet var an ed er sizun dremen, G. M.

FEIZ AN EDD.

KEMPER. — 23 guengolo.		PONTNABAT. — 26 gueng.	
Priz ar c'hant lur.		Priz ar c'hant lur.	
Guinis....	47 lur, 06 c.	Guinis....	48 lur, 43 c.
Segal....	43 lur, 59 c.	Segal....	42 lur, 76 c.
Eiz.....	40 lur, 26 c.	Eiz.....	44 lur, « c.
Ed-du....	8 lur, 46 c.	Ed-du....	9 lur, 58 c.
Kerc'h....	46 lur, 24 c.	Kerc'h....	44 lur, « c.
Avalou-douar	4 lur, 73 c.	Avalou-douar	4 lur, 25 c.

Ar Gerant: AR. DE KERANGAL.

Kemper, moulet gant Ar. DE KERANGAL, Moulet an Escopi.

FEIZ HA BREIZ,

KELOU A BEP BRO, HA KENTELIOU VAR BEP TRA,

DIGASSET BEP SUL

Da guement Christen a goms ar brezouneec.

Eun Abonnamant d'ar Gazeten à goust :

Evit eur bloas.....	DAOU SCOUET.
Evit c'huec'h miz.....	EUR SCOUET.
Evit tri miz.....	C'HUEC'H REAL.
Eur gazeten ebken.....	DAOU VENNEC.

Ar bacamant a dle beza great araog caout ar gazeten.

ALIOU

Ar scrijou a ve c'hoant da lacat er gazeten a dleer da adressi oll d'an Aotrou MORVAN, Beleg e Kemper.
Ar pacamanchou a dleer da adressi d'an Aotrou SALAUN ebken. An abonnamant a guemerer e d'ar Aotrou SALAUN, librer, ru Kereon, e Kemper.

KEMPER, 12 Here 1867.

Doze a lavare guechall dre c'hinou ar profet Malachi : « Adaleg ar sao-heol beteg ar c'huz-heol ez eo bras va hano etbuez an oll bobliou ; e pep leac'h, e pep carter e kinniguer em hano eur zacrifis didach. »

Hirio dreist oll pa zeo prezeguet an Avel, pa zeo anavezet ar guir Doue, pa zeo skignet ar guir religion en oll broiou, eo deuz ar c'homzou-ze da veza guir.

Hirio ne dremen nag heur na moment nag euz an deiz nag euz an noz ep ma ve lavaret an oferen santel en eun tu bennag. Dre an oferen hano Jesus a zo braz etouez an oll bobliou, hag e pep leac'h, e pep corn euz an douar, an oan didach a so kinnignet ep ean evit silvidiguez ar bed.

Eur gazeten am eus dirag va daoulagad hag a verc, azaleg anternoz beteg anternoz, da lavaret eo, epad ar peder heur varnuguent ma pad an dervez, ar broiou ma lavarer an oferen enho e pehini euz an heuriou-ze. Hoguen re hir e ve din lacat ama an daolen-ze hed ha hed. Avoalc'h eo evit compren ar pez a leveromp ama, sonjal ez eo an douar evel oc'h eur voul, e ra eun dro hemdez, hag e tremen pep corn anezhan eur vech hemdez dirag au heol. Evelse dre ma tro an douar, ez euz ato eur c'hostez anezhan troet oc'h an heol, hag an heol so ato o sevel en eur c'harter hag o-cuzet en eur c'harter all. Pa zeo guir eta ema ato an heol o sevel en eur c'harter bennag ; pa zeo guir ive ez eo da zao-heol pe brest goude eo e leverer an oferenno e pep carter, e c'heller lavaret ive, ep aoun d'en em drompla, ez euz ato eur c'harter bennag eleac'h m'ema an oferenno o ren : eleac'h m'ema ar veleien o kinniguen ar Sacrifis santel da Zoue. Hag evel ma zeus brema cristenien catolic ha beleien e pep carter euz ar bed, an oferen santel a zo ive lavaret ato ep ean eun tu bennag. Ar re eta o deus c'hoant d'en em unani a speret hag a galon gant ar veleien a lavar an oferen ha gant ar gristenien o deuz an eurvad d'he c'hlevet, a ell heu ober da bep mare, n'eus fors pe da heur euz an deiz hag euz an noz.

Jesus eta a ziken ep ean euz an Envyan an aoter, en em guinnig ep ean da Zoue he dad evidomp, a fignendalc'h da ober bep momet ar pez en deuz great eur vech var ar c'halvar. Hiviziken an oferenno ne eavint morse. Pa vez ar mintin evidomp e ren an oferenno er vro-ma, pa vez creiz an deiz evidomp, e renont en Americ ; pa vez an noz o tout, er vro-ma e renont en euz, ha pa vez creiz an noz ama, ema neuze an oferenno en ASI.

Setu eno hag a ziskuez sefaer pe guir braz eo garantez Jesus evidomp, ha pe guir guir eo ar pez a lavar eo eun dudi evithan beza gant bugale an dud.

Rom. — E'kar Albano eo canet ar c'holera ; e Rom e talc'h ato da skei unan bennag. An Tad Santel, en despet d'an oll zoursiou en deus, ne ancoupac ha ket ar re glan. He guenta medecin a dle bemnoz rei dezhan da anaout penaoz ez a ar iec'het e kar ha peha a rer evit pellaat ar c'hlevet. Lezel a ra zoken a gostez am oferion all evit sonjal e kementse ha comz oc'h hevedesin.

En dez all ar Pap a ioa eat da gunt gouant illeanezet. Ar superioez a anzavaz outhan en eur gona o devoa aoun na denje an dispac'herien var Rom.

« Maouez a nebeut a feiz, eme ar Pap, ha ne buzoec'h hu ket ne zigas morse. Doue diou voalun var eun dro ? Bez' on euz ar c'holera, hag e sonjal deoc'h on bezo vive Garibaldi ? »

Evel ma zeo bihaneet an domder, eo c'h espererive ez aio ar c'hlevet en he dro ep dale.

Labourat a rer calz e Rom da bouc'haz a'pez so red evit ar Sened a dle beza er bloaz a zeo.

An trivac'h euz a vis guengolo ez euz canet eur zervich deiz ha bloaz evit ar zoudardet maro e stoumad Castelfidardo.

Cas a rer var araog ar ptoez evit canoniza an den eurus Joseph Labr.

Dalc'h mad ez a bandennou missionerien en hent evit mont da brezeg an Avel er broiou-pell. Euz a Autun

ez eus diblaset pemp tad oblat evit mont d'an Americ, e an anteroz. Ar re-ma zo pemp missioner iaouanc hag beleguet an 30 a viz even diveza.

Euz a Varsail eus nevez diblaset daouzeg leanez euz a di an Itron-Varia-Sion. Mont a reont lod da Constantinopl, ha da Galcedouan, lod all d'ar Moldavi eleac'h ma o deus meur a di evit diguemeret ar re glan hag ar re baour.

Jeruzalem. — El Liban hag er Syri, ervez ma scrifer euz ar vro-ze, eo caer hirio an descadurez christen a roer d'ar iaouankis. Cals relijiuzet so en em lakeat a zevri da guelen ar re iaouanc. Tadou Sant Fransez euz an douar santel o deuz e Syri seiz couent, eur scolach ha nao di scol ouспен ar c'houenchou. An tadou Cabucinet, an tadou a urs Carmez o deuz ive eun ti scol ben-nag. An tadou a Compagnunez Jesus, goude beza bet red dezho dilezel, brema ez euz eun nebeut bloaveziou, ar scolachou o doa savet eno guechall, o deuz e ber amzer savet a nevez c'huac'h scol, eur scolach braz, hag eur c'hlouardi pe eur seminer.

Ar Pabet o deus laket tadou Lazaristet da zerc'hel pemp scol bet savet guechall gant Jesuistet. C'hoarezet Sant Visant a Baul, c'hoarezet Sant Joseph hag ar Galon Sacr o deus savet ive eun niver braz a scoliou eleac'h ma tescont ha ma tiorroont er guir seiz cals merc'hed iaouanc. E c'huezeg vloaz o deus savet deg scol. Eno e tescont d'ar merc'hedigou, lenn, scrifa, griat, ha dreist oll ar c'hatekis. El Liban ez eus yadro unneg cant buguel, etre potred ha merc'hed, renet gant an tadou a Compagnunez Jesus.

Evelse ar guir seiz ne ell ket mancout d'en em skigna er broiou-ze pere so tost d'an douar santel, tost d'ar c'harter-ze eleac'h m'en deuz hor Zalver Jesus-Christ devet etouez an dud.

Paris. — Tost da Bariz, e creiz eur c'hoat braz hanvet *coat Bondy*, ez euz eur chapel vrag savet var eun dorguennig. Ar chapel-ze a zong an hano a Itron-Varia an Elez, hag a zo bet savet eno evit derc'hel sonch euz eur burzud caergreat eno gant ar Verc'hez er bloas 1212, en amzer ma edo ar Pap braz Inosant trede var gador Sant Per. Setu ama penaus eo merket ar burzud-ze var moguer ar chapel.

« Er goan euz ar bloas mil daouc'hant daouzeg, tri varc'hadour euz an Anjou, o tremen dre goat Bondy, a voue taguet gant al laeron, ha staguet gantho oc'h ar guez eleac'h ma, chomjont eun dervez hag eun nosvez. Oc'h en em velet ken tost d'ar maro en em voestljont dar yerc'hez santel. Kerkent e teuz eun xel d'ho dilia-ma. Dre anaoudeguez vad evit ar c'hras-ze; e savjont eun aoterie hag e lakejont varnezhan skeuden ho mado-berourez. Aboune ez eus bet ama pareet kement a dud, ez eus bet great burzudou ker braz ha ker stang ma zeo bet savet er chapel-ma pehini a ia ato var gaeraat dre ofransou ar re a deu ama da bandona. »

Bep bloaz e vez eun navet e chapel Itron-Varia an Elez, e mis guengolo. Ar gristenien vad euz a Bariz a gar

mont di evit an navet-ze, hag an niver braz euz ar bardo-nerien couls hag ho devosion a ziskuez ez eus c'hoas feiz er guir vras Vadro pemp mil varnuguent a bardo-nerien a ioua bet er chapel-ze dissul diveza. G. M.

HISTOR ZANTEL TENNET DIVAR LEVR ANN EXOD.

(KENTA PENNAD VAR-N-UGHENT).

An dek gourc'henn. — (EXOD XX.)

Ar gurun a ehanaz, ann drompill a davaz, hag ann Aotrou-Doue a lavaraz ar c'homzou-ma holl :

1. Me eo ann Aotrou ho Toue, me eo em euz ho tennet euz a zouar ann Ejipt, hag euz a di ar sklavez. N'ho pezo ket a zoueou estren dira-z-oun. Na reot ket evid-hoc'h skeudennou kizellet, nag lieveledighez ebed euz ann traou a zo enn neac'h ebarz enn Env, nag enn traon var ann douar, nag euz ar re a zo enn dour dindan ann douar. Ne adorot ket anezho, ha ne reot ket lidou enn ho enor. Me eo ann Aotrou ho Toue, ann Doue kre, oazuz euz ho kalounou, hag a venj goall-oberiou ann tadou var ar vugale beteg, ann trede hag ar pevare rumm euz ar re ho deuz kaz ouz-in. Hag a ra trugarez a-hed mil rumm d'ar re am c'har hag a vir va gourc'hennou.

2. Na ghemerot ket hano ann Aotrou ho Toue enner pe ez vean. Rak ann Aotrou ne zalc'ho ket evit divlam ann hini en devezo kemeret hano ann Aotrou he Zoue enner.

3. Ho pet sonj da zantifa Deiz ar Sabbat, pe Deiz ann ehan. Epad c'houec'h devez e labourrot, hag e reot ar pez ho pezo da ober; mes d'ar seizved devez ema Sabbat ann Aotrou ho Toue. Na reot labour ebed enn deiz-ze, na c'houi, nag ho map, na ho merc'h, nag ho mevel, nag ho matez, nag ho jao, nag ann diaviziad a vezo ho choum enn ho keariou. Rak ann Aotrou en deuz great e c'houec'h devez ann Env, ann douar, ar mor ha kement tra a zo enn-ho, hag en deuz ehanet d'an seizved devez. Dre'n-abek da ze ann Aotrou en deuz benniget Deiz ar Sabbat ha great anezhan eun deiz santel.

4. Enorit ho tad hag ho mamm, evit ma vevot pell-amzer var ann douar a roio d'ehoc'h ann Aotrou ho Toue.

5. Na lazot ket.

6. Na reot ket avoultrerez.

7. Na laerot ket.

8. Na zougot ket fals-testeni a enep ho nesa.

9. ha 10. Na c'hoanteot ket ti ho nesa; na glaskot ket kaout he c'hreg, nag he vevel, nag he vatez, nag he ejenn, nag e azen, na netra a ghemment a zo d'ez-han.

Setu penaoz eo bet embannet gourc'hennou Doue, ar vamm-lezen euz ann holl lezennou all. Ne ket aliou a zo ama, na kuzulou a barfedighez, mad da heulia pe da lezel hep pec'hed marvel. Al lezen eternal eo hou-ma, skrivet gant Doue e kouzianz pep den, hag a renker da

virout dindan boan da veza reuzadik er bed-ma, ha dan goll ar vuez eternal.

Pa oe ehanet Doue da gomz ouz ar bobl; ar gurma drouzaz adarre, ann drompill a zouaz, a luec'hed a zalam-me euz ar menez evel flammou-tan, ar menez a voghede goaz eghet biskoaz, hag ar bobl, o yelout an traou-ze, en em zalc'he karghet a spount, pell-diouc'h ar menez. Hag e leverjont da Voizes: Komzit d'eomp, c'houi, hag e selaouimp ac'hanoc'h, arabad eo e komzfe mui ann Aotrou ouz-omp, gant aoun na varfemp.

Ha Moizes a lavaraz d'ar bobl: N'ho pezet ket aoun; Done a zo deuet evelse evit hoc'h amproui, hag evit ma choumze he zoujanz enn-hoc'h, ha na bec'haec'h ket.

Ar bobl eta en em zalc'haz a-bell. Ha Moizes a dostaaz ouz ann devalijen e oa Doue enn-hi. Ha Doue a lavaraz d'ezhan: klevet am euz komzou ar bobl, plijout a ra d'in ar merk-se euz he zoujanz hag euz he zentidighez. Livirit d'ez'han c'hoaz eur veach euz va ferz: Bugale Israel, guelet hoc'h euz em euz komzet ouz-hoc'h euz ann Env; na reot ket doueou arc'hant, na doueou aour evid-hoc'h. Ober a reot d'ia eun aoter gant douar hag e kennigot var-n-ezhi ho sakrifisou-losk (sakrifisou e pere e vije devet kig al loened.) hag hoc'h hostivou a beoc'h, ho tenved hag hoc'h ejenned, e kement leac'h ma vezo great lid da enori va hano. Mar grit d'in eun aoter gant mein ne zavot ket anezhi gant mein benet, rak ma likiit ar ghizar var-n-ezhi, e vezo dic'hlan. Dont a rinn d'ho kavout ha va bennoz a roinn d'ehoc'h.

Neuze ann Aotrou-Doue, abarz leaskel Moizes da zistrei da gavout ar bobl, a roaz d'ezhan eur rumm lezennou, a c'halver lezennou ar reiz. Ne d-int nemet ann displeg pe ar munudou euz ann dek gourc'henn. Lod euz al lezennou-ze na zellent nemet ouz ar bobl a Israel, hag a oa lezennou ho gouarnamant; kouskoude pep kristen a hell ho lenn hag ho studia, hag e servichint kalz da rei d'ezhan eur spered eun, leal, ha madelezuz. Ho c'havout a rear eun eul levr brezounek hanvet skrituriou sakr. H.

BUEZ SANT VISANT FERRIER.

(DECVED PENNAD).

Sant Visant en he sermoniou, a boneze peur liessa var dri zra, da c'houzout eo, var bassion hor Salver Jesus-Christ, var ar varn ha var an ifern. Pa vije o prezeg var unan euz an teir virionez-ze, he vouez a deue da guemer kement a nerz, ma rea tremen e calonou aneb hen sellaoe ar pez a dremene en he galon e-unan. Prest an oll sellaoerrien a n'em lake da vouela ken huel, ma ranke aliez Visant disken euz ar gador, rag irvoudou ar bobl a zave dreist he vouez. Biscoaz den n'en deuz guellet parlant ker freaz na lacat ken sclear ar scritur santel da velet evel-han. Pa brezegue var eur si-fall benag, e tiscoueze anat d'an holl ar virionez euz ar pez a lavare, dre ar scritur santel ha dre zoctrin pe comzou an Tadou santel euz an Iliz. Eur memor en doa da zerc'hel

sounj e pep tra euz ar peze en doa goulet pe lavare. Evel-se an dud en eur zistrei euz he sermonioz a lavare an eil d'egail, ne vontent ket penaus eun den en deuz gallet lacat kement all a drabu en he ben. Diessa trazo d'eur sermonioz, m'eo ket distreio euz pec'her braz euz he dechotad hag he lacat da zont da veza christen, diessoc'h e c'hoaz calz rei da gredi d'ar Jusevenn. Bar brotestanted pe d'ar vahometaned, ar virionez euz oad rilijion catolic. Conta a rear evelato var dro pemp-mil varnugent euz a doue ar Jusevien distroet euz ho errold gand Sant Visant er Spagn ebken, ha tost da vad kement all a vahometaned. Great en deuz ive sevel calz couenchou, calz hospitalliou pe clauvourdi ha calz ilizo. Lacat a rea ar peoc'h da ren er c'hermou, mouga a rea ar gassoni etouez an dud oc'h ober da bep unan en em garet evel breudeur ma-z-omp. Ouspenn ma vo ar zant eur prezegur mad-dreist, Doue en doa c'hoaz reot d'ez'han ar pez a laca eun den da veza amabl da lavare, e eun ear laouen hag eun diavez carantez. He vouez a ioa huel, cren ha duduz da glevet, hag a rea avit da guement hen c'hleve o cana an oteren pe o prezeg. Evel-se, n'euz fors peguet pell e vlet outhan pa vije o prezeg he vije ket red er outhan ar scouarn evit clevet freaz ar pez a lavare. Lavaret a rear eun dra all burzuduz euz a Visant: pa vije o prezeg, e comze er iez pe el langach en doa desket en he vugalech, hag e roe evel-ato da gompren ha da c'houzout d'an dud euz ar Gres; euz an Almag, euz a Sard, kercoulz ha d'ar Vretoned a Vreiz-Izel. Petra benag ne glaske morse nemed meuleudi Doue e kement a rea hag a lavare, e c'houenze ive evelato meuleudi an dud. Pa dremene dre eur guer benag, ar bobl, an noblans, ar veledien ha beteg an skribien a deue d'her c'hoat. Diguemerete vije gand ar c'han euz ar c'haera lido, hag enoret dre bep leac'h evel pa vije bet unan euz an daouzec abostol a voua guechall gand Jesus-Christ. Ar zant a garje ervad pellat out-han an enoriou-ze, mez o velet ar vad a rent d'ar garg a zougue, e teuz da rei meuleudi da Zoue a falveze d'ez-han kement-ze evid he c'hoar ha silvidiguez an eneo.

Pa vije o prezeg, an dud a viche a leze ho labourou a gostez: an holl a garje hen sillaou, beteg zoken an dud clauv hag amparfall a falveze d'ez-ho beza douget he veteg. Etre ma chomme en eur guer, ne glevet mui lioudoujou na charneou; na velet mui na dansou, hag ebatou na netra a guement a zong d'ar pec'her. Coueret a rear neuze kement a vertus etouez ar bobl braz ha ban, ma vije lavaret ez oa distroet var an douar amzer santel an Ebstel. Hag e feat, calz tud guidit he velet ar vad a rea dre kement leac'h ma tremene he velet ar burzud a lake Doue anez-han da ober he velet hag he santet hag he furnez, a lavare he voua bet oed aboued an Ebstel santelloc'h egnel Visant. Na d'omp re e raont souez e teuje ar bobl da beot d'he zouarn, ker braz ez-oa ar respet a zougnet d'ez-han. Ar bobl a c'hoante kement peoc'h d'an daouarn santel-ze, ma vije red mad avechou, evit divoual na vije mouguet ar zant gand he

ment a'ast'el'ost'et' onthan; lacat eur speuren' etfe' hen
 hag an dud' Pa ziskenne' en eur guezar; ar roue' euz ar
 gued' a'ze' hede' ket' ez' aje' Visant' d'her' haout' d'ar
 palez' me' a' he' unan' d'he' gaout' Violante' donañez
 Aragon' a' grede' dre' ma' voa' eur' gurunen' van' he' ten,
 guell'ant' mont' beteg' ar' zant' , nen' he' gambr' metepz.
 Visant' a' reaz' he' voalc' he' evit' he' vije' ket' roet' d'ar' rouanez
 kuriuz' ze' digor' er' gouent' m' aez' oardiskennet' en' hi ;
 mez' c'ousgoude' o' velet' ne' helle' ket' prenna' out' h' an' or
 dre' zoujans' evid' ar' renk' huella' zougue' , et' cavaz' c'hoaz
 an' tu' da' jom' kuzet' etre' ma' cho'mmaz' ar' rouanez' er
 manec' h'li' Ar' rouanez' man' poaniet' dre' ma' ne' devoa' ket
 gouelet' ar' zant' , a' n' em' laca' e' tu' da' velet' dre' guz' , ar' pez
 a' rea' Visant' pa' vije' e' unan' en' he' gambr' . Hoguen' an' noz
 o' veza' er' net' , en' em' laca' e' kichen' ar' gambr' zo' , ha' var
 mare' ant' er' noz' , e' te' da' sell'et' dre' doull' an' alc'houez.
 Petra' vel' ? Visant' daoulinet' ; hag' eur' selerijen' ar' gaera
 er' dro' d'ez' han' . Sebez'et' o' velet' eun' evelep' tra' ; Violante
 a' n' em' derin' ahano' buanna' ma' hell' , hag' a' houdevech
 ne' glask' mui' ar' doare' da' c'houzout' ar' pez' ne' iselle' ket
 out' h'li' .

BODEUR.

(Eur' pennud' all' divizatoc'h) .

LIZIRI DA DUD DIVAR AR MEAZ.

NAVET OLIZER.

DA VA' NIZES' CLAUDINA.

Divar' benn' ab' d'ou' he' z' h' ag' ar' isson' a' deu' d' e' heul' .

Clevet e peus, me c'hoar vad, Claudina, eo eat Julian
 lip he vanne da jom e kichen' leat, gant he c'hreg' hag
 he vugaligou : an dudigou ze' ta zo' eat da baour ran ;
 maes kement se' re' t'le' estrum' aler ; rac penaos ken-
 dere' hel eur stalic gant visson eghis m' o deus an' daou
 bried-se ? Pa zimesjont, e resejont, an eil hag he ghile,
 bep a zournadic mad a vounis a bers ho c'herent, ha,
 dre voneur, e cavjont eun' tyeghez' e' bihan' e' guirione,
 maes e pehini gousoude, gant furnez' hag' aket, o' divije
 ghellet beva braoic, rac an douaron' n' oant ha' re' dreut
 na re gher. Maes, allas ! goude bea' bet fir, goude bea
 poaniet epad' pevar bloas eghis ma' reud' pep' unan' ober
 evit beva, Julian a' en' em' roas' d' al' hoessonn' maleurus.
 Ne vije mui cavet nemet enn' hostaliryon, e' peleac'h,
 evit' caout' eur' banne' brossod' h' e' kemere' euz' an' e' h'istr
 falla' hag' euz' ar' b'eter' abez' a' vella' marc' had' : Dre' ar
 hoessonn' bren' ze' he' z'at' cas' ket' da' goll' he' yec' hed' .
 Alles, goude' he' govadoug' , e' c'houme' clan' ha' ne' helle
 en' em' b'aea' nemet' en' eur' ober' goassos' h' , corvad' . Ne
 ket' rag' eur' v'echa' no' d'ou' zo' e' bet' guelet' o' tuill' e' foss'
 an' hent' h' as' e' peleac'h' e' den' s' rement' mour' an' osvez' .
 Eur' v'eb' h' i' s' p' i' s' a' l' e' z' e' o' z' i' s' v' a' r' h' e' b' e' n' n' e' n' eur
 poull' doung' m' d' s' e' n' e' b' m' a' p' a' s' e' o' n' e' t' a' e' o' an' dou' e
 d'houmas' var' gorre' h' e' c' h' r' e' g' a' d' e' u' s' , d' e' n' a' n' g' l' a' s' e' h' a' g'
 or' o' h' a' m' a' s' , s' e' o' u' r' n' e' t' e' u' z' i' o' e' d' a' g' o' s' t' e' z' , l' a' k' e' a' t' e' n' n'
 eur' guelet' tom' h' o' r' p' o' t' r' a' z' i' s' t' r' e' a' s' d' a' r' v' e' z' , i' a' n' t' r' o' n' o' z'
 e' d' o' u' a' s' d' a' n' o' u' m' p' a' s' m' u' i' t' a' n' t' a' b' a' n' n' e' e' b' e' t' ; m' e' s' a' l' l' a' s' !

me' neuze, an' e' h' r' e' g' a' g' a' s' s' a' n' a' n' t' r' a' o' u' t' o' u' z' a' n' t' y' ; a' n'
 dyen, an' am' g' o' u' y' a' n' i' d' h' a' g' a' n' t' r' a' o' u' m' b' a' t' o' d' e' d' a' s' s' a' t' a' n'
 hostichen' ; an' eil' goude' he' ghile' . An' d' i' l' l' a' d' d' i' v' i' z' e' h' a' g'
 ar' voalen' eured' a' zo' memes' a' d' e' v' e' r' u' s' ; g' u' e' z' e' t' e' z' e' z' e' t'
 ha' d' r' e' b' e' t' . H' a' g' a' n' t' a' n' d' r' a' z' e' ; M' a' c' h' a' r' i' t' a' c' n' e' m' g' a' v'
 ato' berr' : R' a' e' o' u' s' p' e' n' m' a' c' a' v' i' n' a' d' h' e' b' a' n' n' e' c' h' i' g' o' d' e' n' ,
 ne' g' a' v' k' e' t' r' e' f' a' l' l' k' e' n' n' e' b' e' n' t' i' f' e' b' a' n' n' e' c' o' f' f' e' a' m' y' s' f' l' e' t' ;
 dent' eo' eun' tamic' re' lipous' . He' m' i' t' i' z' i' e' n' a' v' a' l' e' i' v' e' b' r' a' o'
 var' he' r' o' u' d' o' u' ; epad' m' a' v' e' s' a' n' c' h' r' e' g' e' h' n' d' a' v' a' r' n' o'
 s' u' n' a' b' a' n' n' e' o' u' d' i' g' a' n' t' k' e' m' e' n' t' c' a' l' k' e' a' d' r' e' m' e' n' t' , (h' a' r' p' i' o' u'
 a' c' h' o' a' r' e' p' e' d' e' s' s' o' u' n' y') a' r' m' i' t' i' z' i' e' n' z' e' a' r' a' h' o' m' e' s' t' r' e' z' e' t'
 e' n' n' t' y' ; p' e' d' i' a' r' e' o' n' t' h' o' c' h' a' m' a' l' a' d' e' t' d' a' z' o' n' t' d' o' g' u' e' l' e' t'
 d' i' a' g' e' l' v' e' s' p' o' d' t' d' i' h' e' z' o' s' o' u' b' e' n' a' l' l' e' a' s' , v' i' o' u' h' a' c' r' a' m' p' o' u' e' z'
 l' a' r' d' e' t' a' s' o' u' s' t' i' n' o' n' a' s' t' a' n' t' s' u' b' m' e' n' t' e' r' .
 An' o' t' y' g' e' h' z' i' e' s' p' a' o' n' n' , d' i' f' f' r' a' m' e' t' d' r' e' a' r' p' e' v' a' r' g' o' s' t' e' z' ,
 m' i' l' l' o' l' l' a' s' k' e' t' p' a' d' o' u' t' . E' u' z' e' u' r' c' h' o' s' t' e' z' , n' o' a' n' e' t' r' a' d' a'
 v' e' r' z' a' h' a' g' e' u' z' e' u' r' c' h' o' s' t' e' z' a' l' l' n' o' a' n' e' m' e' t' g' l' e' . O' c' h' e' u'
 o' m' l' v' e' l' e' t' , p' a' o' u' r' J' o' h' n' a' n' d' a' o' u' b' r' i' e' d' a' g' l' e' m' e' r' a' s' c' a' z' a' n'
 o' i' l' g' u' z' s' h' e' r' g' h' i' l' e' d' h' e' m' d' e' n' e' v' i' j' e' c' l' e' v' e' t' n' e' m' e' t' l' a' n' g' a'
 c' h' o' u' c' h' u' e' r' o' h' a' r' e' b' e' c' h' o' u' p' o' u' n' e' r' ; a' l' i' e' s' m' e' m' e' s' e' v' i' j' e'
 g' h' e' t' e' t' e' l' r' e' z' o' t' a' o' l' i' o' u' d' o' u' r' n' h' a' c' h' a' c' h' b' l' e' o' : A' r' v' u' g' a' l' e' a'
 y' o' a' d' i' l' e' z' e' t' ; d' e' n' n' e' z' e' s' k' e' d' h' e' o' n' a' p' a' t' e' r' n' a' n' o' s' t' e' r' ; n' e'
 v' e' l' e' t' e' d' e' m' e' t' s' e' o' n' e' j' o' u' r' f' a' l' l' . O' g' u' e' l' e' t' e' p' i' z' e' o' v' o' u' t' h' a' g'
 o' t' o' u' l' l' a' n' t' e' r' v' i' s' k' e' t' h' a' l' o' u' z' e' g' h' i' s' a' r' s' e' i' z' p' e' c' h' e' t' c' a' p' i' t' a' l' .
 e' l' l' o' m' i' s' m' a' n' d' g' h' e' m' e' t' o' m' u' r' a' b' o' a' n' d' a' o' b' e' r' a' n' d' i' s' t' e' r' a'
 c' r' a' t' e' n' n' o' o' l' l' a' d' m' e' m' e' s' , h' e' u' d' i' l' l' a' d' e' u' n' a' n' a' y' o' a' i' v' e'
 l' o' g' h' e' l' l' a' g' o' l' e' s' u' r' b' r' i' d' h' a' g' h' e' d' d' u' r' a' g' r' e' n' e' r' e' g' a' n' t' a' r'
 s' h' o' e' s' s' o' o' n' e' v' i' t' g' h' e' l' l' e' g' l' e' a' s' t' n' i' b' e' n' m' a' d' o' s' t' ; h' u' g' h' i' e' n' ,
 n' e' d' i' v' i' j' e' k' e' t' m' a' m' e' s' l' a' s' k' e' t' e' n' o' b' e' r' , r' a' c' d' e' u' t' o' a' f' e' h' e' a' n' t'
 n' e' g' h' i' s' a' l' l' a' e' r' . N' o' o' u' t' e' m' u' i' n' a' g' o' b' e' r' e' u' r' b' a' n' n' i' c' s' o' u' b' e' n' ,
 m' a' g' d' e' z' a' o' u' n' t' a' m' i' c' o' d' a' s' f' e' s' s' o' u' n' . E' r' z' o' u' b' e' n' h' a' g' e' l' l' e' a' s'
 z' h' e' g' a' n' e' t' p' e' m' e' t' l' i' e' o' h' a' k' e' l' l' i' e' n' p' a' r' i' o' d' a' y' o' a' a' t' o' r' e' d' e' o'
 - p' d' r' e' d' a' n' d' ; a' n' a' m' a' n' n' a' v' e' z' e' d' u' g' a' n' t' a' n' t' r' a' o' u' a' g' o' u' e'
 z' e' e' p' h' a' o' u' z' i' r' a' n' g' h' e' g' h' i' n' d' u' r' e' z' , (r' a' c' c' o' m' m' a' n' s' e' t' o' a' i' v' e' ,
 i' m' a' n' g' l' i' s' d' a' l' a' c' a' t' b' u' t' u' n' a') N' i' o' a' m' u' i' k' e' n' n' e' b' e' n' t' , h' e' u' r'
 d' i' o' u' z' h' e' u' r' d' a' i' z' r' i' b' i' l' i' t' e' n' t' h' e' n' t' h' a' c' o' a' p' . G' a' n' t' e' u' n' h' e' v' e'
 l' e' p' d' e' o' u' r' e' n' n' e' j' o' u' m' e' m' u' i' c' a' m' e' v' e' l' n' a' m' a' t' e' s' a' . f' e' s'
 s' o' u' n' e' d' l' e' d' p' r' o' b' t' i' v' e' n' o' q' r' e' c' e' d' e' g' e' a' t' e' l' .
 E' r' f' i' n' n' e' s' t' a' n' t' y' e' g' h' e' z' i' o' v' e' l' e' t' n' a' r' e' s' e' v' e' m' u' i' h' e'
 n' t' h' e' r' e' t' i' c' a' l' , e' t' d' e' b' s' l' a' k' e' n' t' g' o' u' e' r' s' , v' a' r' a' n' d' a' o' u' b' r' i' e' d' .
 M' a' s' i' n' t' b' r' e' m' a' d' a' j' o' m' e' d' i' c' h' e' n' k' e' a' r' e' p' e' l' e' a' c' h' e' e' h' e' n'
 e' m' d' e' n' n' , a' l' e' v' e' r' e' r' , a' n' o' l' l' a' d' d' i' v' i' s' e' t' . M' a' l' e' u' r' s' i' n' t'
 e' g' h' i' s' a' r' d' r' o' n' e' s' p' e' r' e' j' o' n' , h' o' b' u' g' a' l' i' g' o' u' a' y' a' h' e' m' d' e' d' a'
 g' l' a' s' e' h' o' h' o' n' e' d' ; g' o' u' s' c' o' u' d' e' n' e' g' r' e' d' a' n' k' e' t' e' t' e' u' f' f' e' J' u' l' i' a' n'
 h' a' g' h' e' V' a' c' h' a' r' i' t' d' a' v' e' z' a' f' u' r' o' g' h' a' r' v' i' s' s' o' u' o' d' e' n' s' a' z' o'
 r' e' z' i' e' s' d' a' z' i' s' e' h' u' z' i' e' n' n' a' . M' a' n' g' h' e' l' l' a' n' e' k' e' m' e' r' i' n' e' m' z' y' a' r'
 v' u' g' a' l' e' , r' a' c' a' o' u' n' e' m' h' e' n' s' n' a' d' e' u' f' f' e' h' o' c' h' e' r' e' n' t' d' o'
 g' o' u' e' r' z' a' c' o' r' f' h' a' g' e' n' e' e' v' i' t' c' a' o' u' t' d' a' z' i' b' i' r' h' a' d' a' e' v' a' . B' r' e'
 m' a' , C' l' a' u' d' i' n' a' , e' v' e' s' s' a' m' a' d' o' u' z' a' r' p' o' a' p' i' o' u' h' a' g' a' r' m' a' l' e' u' r'
 i' o' u' a' d' e' u' v' a' r' l' e' r' c' h' a' r' v' e' s' v' e' n' t' i' , h' a' g' i' v' e' o' u' z' a' r' v' i' s' s' o' u' a'
 d' e' u' d' e' h' e' u' l' ; l' a' c' a' e' v' e' z' i' s' p' i' s' i' a' l' , d' a' v' e' z' a' t' o' f' u' r' h' a' d' a'
 b' e' l' l' a' a' t' d' i' o' u' s' d' a' d' y' a' r' v' o' s' s' e' n' s' p' o' u' n' t' u' z' e' u' z' a' l' l' o' u' n' k' e' r' e' z' ,
 O' . H' .
 E' u' z' a' b' a' r' r' e' z' a' P' r' a' t' i' e' n' e' s' e' p' t' i' l' S' a' n' t' - B' r' i' e' c' , e' s' c' r' i' f' e' r'
 d' e' o' m' p' k' e' m' e' n' t' m' a' s' t' e' r' a' g' o' u' z' i' s' d' e' a' s' t' e' r' e' s' e' l' l' e' t' e' s' t' e' l' l' e' t'
 s' u' e' j' a' s' . E' u' r' g' r' a' d' i' v' a' r' b' e' n' n' h' a' d' m' i' s' s' i' o' n' . P' r' a' t' i' e' s' e' s' t'
 ; O' t' e' u' r' v' e' e' t' , m' a' r' p' l' i' j' e' r' e' t' k' e' f' e' n' h' o' k' a' z' e' t' e' n' e' u' z' h' o' n'

hadmission. Goude kement hoc'houz' disleiget' diwar
 benn' missiono' Penmarc' he' ha' Sant' Thegonet' le' g' e' n' n' e' n'
 Feis' h' a' B' r' e' i' z' h' a' o' a' r' d' i' j' a' p' e' t' r' a' s' o' t' e' u' r' m' i' s' s' i' o' n' e' n' h' o' n'
 d' n' o' h' a' a' d' a' m' i' l' e' f' e' n' e' t' r' a' s' d' a' l' a' r' e' t' a' n' e' v' e' . N' a' s' o' m' z' i' n' k' e' t'
 n' e' t' a' e' u' z' k' e' m' e' n' t' z' o' b' e' t' c' h' o' a' r' v' e' l' , e' n' h' o' n' h' a' d' m' i' s' s' i' o' n'
 p' h' i' n' i' z' d' h' e' k' e' r' e' n' n' g' w' a' r' i' o' n' e' h' a' g' d' a' n' e' u' z' g' r' e' t' k' a' z' a'
 v' a' d' e' m' b' o' n' t' o' u' e' z' . N' a' m' i' d' e' a' n' d' i' m' a' t' d' i' s' k' l' e' r' i' a' d' a' g' e' m' e' n' t'
 a' l' l' o' n' h' a' d' k' e' l' b' n' a' c' h' a' n' o' u' d' a' g' e' z' v' a' d' e' w' i' t' a' s' r' e' n' e' u' z'
 o' l' a' b' o' u' r' t' o' e' m' d' e' i' o' z' a' h' t' e' l' l' m' a' n' e' o' k' e' r' z' h' o' n' i' g' e' n' o' . D' e' c' h' e'
 o' a' v' e' d' e' d' i' v' e' z' a' g' u' z' a' n' h' a' d' m' i' s' s' i' o' n' h' a' g' e' o' a' m' p' c' h' o' a' z'
 l' e' i' z' a' n' o' l' i' z' i' e' n' h' i' o' d' a' d' a' t' a' d' n' m' i' s' s' i' o' n' a' r' i' e' n' h' a' d' a' r' v' e' l' e' i' e' n'
 a' l' l' d' e' u' t' d' i' h' e' z' i' k' o' u' r' . K' e' n' m' a' d' h' a' k' e' n' e' u' n' z' a' o' a' m' p' b' e' t'
 g' a' n' t' h' e' e' p' a' d' n' i' z' u' n' m' a' m' i' o' a' m' p' h' e' u' z' h' o' c' h' u' i' t' a' t' .
 B' e' n' n' o' z' D' o' u' e' d' i' h' e' h' a' d' a' b' l' i' j' o' g' a' n' t' h' a' n' e' u' r' w' e' l' l' e' m' p'
 e' u' n' d' e' e' n' h' e' v' a' r' a' d' o' z' e' v' e' l' m' a' d' a' n' e' d' i' m' p' a' n' t' a' d' . C' o' n' j' a' t'
 e' n' h' e' g' o' m' z' i' o' d' i' v' e' z' a' ! B' e' n' n' o' z' D' o' u' e' d' i' a' n' t' a' d' m' a' d' m' a' n'
 h' a' d' a' n' t' a' d' B' l' e' u' z' e' n' h' e' g' e' n' t' o' u' z' a' n' t' e' l' p' o' r' t' n' e' u' z' d' o'
 d' a' o' u' a' d' a' l' e' g' a' r' b' e' u' r' e' b' d' e' n' o' z' k' o' m' e' n' t' p' o' a' n' e' t' s' a' n' e' m' p'
 e' n' d' e' i' o' m' a' n' g' . N' o' u' z' o' n' t' k' e' t' p' e' g' e' m' e' n' t' a' d' h' e' d' e' u' z' g' r' e' t'
 d' i' m' p' . G' a' l' l' e' t' h' o' d' e' u' z' g' w' e' l' e' t' g' a' n' t' p' e' h' e' z' h' a' s' e' t' i' r' e' d' a' m' p'
 d' h' o' e' l' l' e' a' d' . N' o' u' z' o' n' t' k' e' t' a' v' a' d' p' e' g' e' m' e' n' t' a' s' k' l' e' r' i' e' n'
 a' r' o' a' n' t' d' h' o' n' s' p' e' r' e' t' o' p' e' g' e' m' e' n' t' e' t' o' u' i' c' h' a' n' t' h' o' n' c' h' a' l' o' n' o'
 p' e' g' e' l' l' i' e' z' e' o' b' e' t' d' e' u' t' a' n' d' a' e' l' o' w' a' r' h' o' n' d' a' o' u' l' a' g' a' d'
 o' k' l' e' w' e' l' h' o' c' h' o' m' z' i' o' n' a' p' e' g' e' l' l' i' e' z' a' h' e' c' h' e' r' p' a' o' u' r' h' o'
 d' e' u' z' p' a' e' t' h' i' h' a' g' a' r' v' e' l' e' i' e' n' a' l' l' d' e' u' t' a' v' a' d' e' m' p' . D' a'
 d' e' m' i' o' D' o' u' e' d' h' o' s' e' r' a' n' h' o' s' p' a' r' . B' e' n' n' o' z' D' o' u' e' i' v' e' d' h' o' n'
 f' a' s' t' o' r' p' h' i' n' i' g' o' u' d' e' b' e' z' a' r' o' e' t' d' i' m' p' e' u' r' j' u' b' i' l' e' n' o' u' z' k' e' t'
 c' h' o' a' z' d' a' o' u' v' l' a' a' n' t' e' u' z' r' e' a' t' d' i' m' p' q' h' o' a' z' h' e' u' n' a' n' b' r' e'
 m' a' n' e' u' n' a' d' m' i' s' s' i' o' n' . D' a' d' e' m' i' o' D' o' u' e' i' v' e' d' h' e' n' p' e' a' h' a' d' a'
 r' e' t' d' i' m' p' a' r' e' h' r' a' s' d' a' l' a' k' a' a' t' d' a' d' a' k' o' u' t' k' e' m' e' n' t' a' r' e' r'
 e' w' i' t' h' o' n' z' i' l' v' i' d' i' g' e' z' e' t' .
 An' d' r' e' g' o' n' y' e' l' a' v' i' z' g' w' a' n' g' o' l' e' 1807 .
 AR MESSABR BERTLE .
 Bertle a' voag' u' i' n' d' i' g' a' L' o' u' r' d' e' s' , e' s' t' a' n' k' e' A' r' c' h' e' s' .
 H' e' d' a' d' a' i' o' a' g' u' i' d' e' r' . B' e' r' t' e' l' e' h' e' a' n' a' v' e' z' a' a' v' e' c' h' a' g' e' h'
 r' a' g' o' n' d' a' n' d' o' u' n' e' m' e' t' h' i' b' l' o' a' s' p' a' h' e' r' c' h' o' l' l' a' z' h' a' g' e'
 c' h' o' m' e' g' a' n' t' a' n' j' o' u' n' e' z' e' h' u' e' c' h' h' u' e' l' h' e' n' e' d' o' a' p' e' m'
 m' a' t' p' o' a' n' h' e' d' i' v' e' c' h' e' v' i' t' h' o' z' e' v' e' l' . M' e' s' e' u' r' g' r' e' t' e' z'
 v' a' d' o' a' g' a' n' e' t' a' r' e' a' l' l' a' b' o' u' r' h' a' l' e' u' n' o' a' u' z' i' a' s' e' m' a'
 d' e' l' e' z' D' o' u' e' .
 An' i' n' t' a' n' v' e' z' m' i' e' a' s' g' a' n' t' b' e' m' i' n' o' r' d' a' t' i' o' n' e' n' e' n' l' e'
 c' h' e' n' e' t' r' o' a' d' a' r' m' e' n' t' z' i' o' u' , e' s' p' a' r' t' e' S' a' n' t' M' a' l' a' i' n' . C' o' n'
 d' e' z' e' e' u' r' c' h' a' r' i' d' e' z' a' i' a' s' t' a' m' a' t' d' e' z' i' o' n' e' n' h' a' d' m' a' d' e' u' p'
 t' i' i' g' e' r' b' o' u' r' g' . E' n' o' v' a' r' b' o' u' e' z' p' o' a' n' t' e' g' o' a' l' c' h' i' b' a' g' o' u' z' a'
 e' u' n' t' a' m' i' g' m' e' s' e' r' e' z' e' t' e' h' e' b' e' r' e' e' u' n' b' a' r' a' d' i' e' b' u' s' a' b'
 e' p' h' o' e' l' h' a' s' d' a' g' l' a' s' e' . H' e' u' e' r' o' l' l' c' a' s' s' a' i' v' e' h' e' z' i' o' u' e' a' p'
 c' a' l' s' . N' e' d' o' a' n' e' m' o' t' i' p' e' m' z' o' s' n' o' a' s' p' a' r' a' z' a' n' t' a' d' h' a'
 n' e' v' o' a' n' e' m' e' t' h' i' l' a' g' e' v' a' p' e' s' t' d' a' s' t' e' r' e' u' n' d' e' s' b' e' r' p' a' g' .
 A' r' v' a' m' a' l' a' b' o' u' r' e' c' o' u' s' d' a' o' u' d' o' n' o' s' d' a' z' e' n' t' i' b' i' l' i' t' e' r'
 m' e' a' z' h' a' g' a' r' v' e' t' e' n' a' l' g' a' n' t' h' e' s' o' u' r' s' i' e' n' z' a' r' v' u' g' a' l' c' a' l' l' h'
 h' o' g' o' s' t' i' k' e' h' o' v' e' h' a' s' s' e' d' a' r' s' o' l' t' i' m' z' e' s' t' r' e' u' e' c' h' o' d' i' d' e' n' t'
 i' o' u' h' a' g' h' o' c' h' a' t' e' l' i' z' e' n' a' l' l' e' s' v' a' n' p' z' o' d' c' o' u' t' h' a' d' e' m' e' n'
 v' i' j' e' g' r' e' a' t' a' r' e' a' m' . A' n' e' t' r' i' b' o' u' r' a' n' o' m' e' j' a' s' s' a' n' t' d' a' s' s' o' o' b'

teui an nevez enho kentoc'h, hag evelse e collint ho ners araog ma vezo dent ar mare d'ho hada; hag evelse eur vech hadet, o devezo muioc'h a boan o poulna griziu ha corz hag e clanvint kentoc'h.

Lizer eur c'had d'he map.

Setu digor ar chasse, digor da lagad ha sao soun da scouarn; ne ket c'hoarzin eo; evez oc'h da ler.

Ne ket eur c'hadig out brema, va map; eis miz e vezi da c'houel Sant Hubert; coz avoalc'h out eta evit gouzout petra eo ar vuez hag evit tec'het dioc'h an ancou, da viana eun nebeut derveziou. Gouzout a rez, pe da viana clevet ec'h eus lavaret e voa ar chasse eur skeuden euz ar vrezel. Evidompni, pa vezo lavaret ar virionez, n'omp ket dispont dirag an ebour. Gouscoude evel ma zout c'hoaz eun neveziat, silaou aliou da dad, paotr coz a zo chomet eur scouarn dezhan var dachen ar vrezel.

Pa veli eun Aotrou iaouanc lipet neat, dillad dibal-pous var he dro; eun fuzil gantha hag a luguern, eur boutou coaret mad en he dreid, eur zac'h ler didach oc'h he gostez, eur c'hi oc'h he heul hag a lam friantz enha; ne ra van; mar emaut e tres da ebatal, kemer da ebat; mar emaut o penri, tor da naoun. Gortos ken na vezo ar c'hi tost dit; tec'h neze; mes na da ket re vuau; les ar c'hi da zont he fri bete da zeuillon. An Aotrou Canfard a denno, hag evel ma ra ato ar chasseourien glazardze, e scoio re izel hag e lazo he gui. Ha setu tro d'it da ober eun abaden c'hoarzin.

Gouscoude sell mad en dro d'it, rag varlerc'h ar c'hanfard iaouanc ez eus marteze eur chasseour coz ha n'en deus ket a c'hoant c'hoarzin. Mar guelez eta o tostaal eun doare dourc'hiz, he varo dem-zu dem-c'hriz, merglet he guelet doul, eur boutou houarnet gantha evel gant eur pillouac'h, eur zac'h oc'h he guein druz avoalc'h da lacat d'ober souben, eur c'hi oc'h he heul hag a erel var he dreid, ha ne zao ket he fri dioc'h an dour, eur c'hi treud evel eur guenneden, laca evez, na jom ket da drichina; ar vosen eo evit hon lignez; ar zac'h ler druzze zo bet lardet gant n'ouspet bim eus da dadou hag eus da vamiou coz. Ar chasseour coz-ze a ia var he dort en eur chilgamat; he gui a ia hag a zeu o c'hoessat kement a zo, kers, kers buhan, ha na jom ket da scrabat da fri. Dioual da groc'hen.

Araog sao heol, cliom etouez ar melchen, ar charrons pe an ed du a zo gliz varnezho. Ar chasseour Canfard ne dai ket eno da c'hibia he voutou; he gui zoken ne grede ket mont da gailhara he zac. Ar chasseour coz ken nebeut ne dai ket eno da farchal. Mes pa en devezo an heol efet ar ghez clase al lenneier; clase ar c'hoajou, mar deus. Bete ma vezo coezet an deliou euz ar guez, ar c'hoajou a ro diguemer mad d'ar guedon. Pa vezo avad goloet an douar gant an deliou, tec'h d'al lenneier. Ar chas divesker ber so diaoulou c'hoezet gant an ifern evit hon distruja.

B'ezon eus gouscoude eun ebour goassoc'h mil guc'h c'hoaz evit ar chas, al lenn, ar c'haerellet vraz hag ar pudasket; frag an ebour-ze eo ar chasseour dre guz, ar chasseour dre laer. Pa veli eun tieg, eur bal pe eur rastel gantha var he scoaz, hag en he zorn eur pennad canabren pe eur pennad orjalen, laca evez! Pa veli eur messaer, eur potr saout, eur fagoder o sellet e doug ar bodennou, kers, kers, kers ac'hano, ha na da ket dre ar guenneden brao, fresc, goloet a c'heot hag a vodou. Eul lindag, eul las-croug a zo eno, ha mar da da c'houzoug el las-ze, ema great gant da groc'hen. Abars ma pezo great teir zachaden var al lindag-ze ema sounnet da vell-kein reud, ha ne zizouno mui.

Tec'h, a lavaran d'it, dioc'h ar chasseourien coz, dioc'h ar chas coz ha dioc'h ar stignerien lasou-croug. Tec'h dioutho evel pa vestag oc'h da lost ar billic eleac'h ma zeus c'hoant d'as lacat da fritta.

Dalc'h sonch mad eus va aliou. GADIK.

Setu ama unan euz a vuzudou ar zouav louzaouer en deus laket coms kement anezhan e Pariz er mis tremenet.

Eun den hag a ioa couls lavaret dall a deuas da gaout al louzaouer evel calz a re all. Evithan ne vele ket, e voa gouscoude eul lunedou gantha var he zaoulagad.

Ar zouav a lavaras dezhan; lamit ho lunedou ha sellit ouzin. Han, guelet a rit, ne ket? — Ne velan ket, eme ar paourkez dall.

— Ne velit ket? Eo, guelet a tit. — Ne ran ket, eme eguile.

— Eo, me lavar deoc'h e velit.

An dall a jomas da zonzal, hag a lavaras neuze:

— Ia da, guelet a ran! — Hag an oll, na petra-ta, sonezet hag estlamet o velet ar burzud.

Pa voa an dall o vont kuit, unan euz ar re a voa gantha a lavaras dezhan: deut eo ar guelet deoc'h-ta?

— Oh! ne ket, eme an dall. — Petra? ne velit ket guelloc'h? — Tam ebet. — Mes neuze perag oc'h eus lavaret e velac'h? — N'em oa ket a c'hoant da dremen evit beza diotoc'h eguet ar re all.

G. M.

PRIZ AN ED.

Table with 2 columns: PRIZ AN ED. and PRIZ AN ED. Lists prices for various items like Guinis, Segal, Eiz, Ed-du, Kerc'h, Avalou-douar in Kemper and Pont-Nabat.

Ar Gerant: AR. DE KERANGAL.

Kemper, moulet gant AR. DE KERANGAL, Moulter an Escopi.

FEIZ HA BREIZ,

KELOU A BEP BRO, HA KENTELIOU VAR BEP TRA,

DIGASSET BEP SUL

Da guement Christen a goms ar brezoune.

Abonnament d'ar Gazeten a goust: Evit eur bloas... DAOU SCOUET. Evit c'huoc'h miz... EUR SCOUET. Evit tri miz... C'HUEC'H REAL. Eur gazeten ebken... DAOU VENNEC. Ar bacamant a dle beza great araog caout ar gazeten.

ALIQU. Ar scrijou a ve c'hoant da lacat ar gazeten a dle beza adressi oll d'an Aotrou MORVAN, Beleg e Kemper. Ar bacamant a dle beza great araog caout ar gazeten.

KEMPER, 19 Here 1867.

An dud o deus nebeut a feiz hag a relijion o deuz ar memes guiziu e pep leac'h. Ho bozament eo ato ober goab euz ar gristenien vad, euz ar re o deus feiz hag a laca ho voban da heulla lezen Doue. Pa gavint tro, ne vankint morse da gaketal divar benn an dud a relijion. Ha ne ket e Frans epken, bro an dud goapaüz, eo e clevet ar c'haketereze, ho c'hlevet a re ive er broiou all. Evelse e Rom ilis Sant Marcel a voa serret eun nebeut zo. Oc'h he c'hempen edot, hag ez oa cals labourou da ober evit kementse. Tud ar barrez, na petra-ta, o devoa mall e vije echu al labourou-ze, evit ma vije adarre digoret an ilis dezho; hag ar re n'emaint nemeur e poan gant ilizou, a c'hoapea hag a lavare: « An debrerien sant o deus mall e ve digoret dezho ilis Sant Marcel; cridi a reont m'oar vad e iac'hai neuze ar c'harter, hag ez ai ar c'holera en he dro! »

Mad, Doue en deus diskuezet e c'houie avechou lacat eun termen da gaketereze an dud difeiz, ha cas, evel a leverer, ho zeod dezho da doull ho gouzoug. Ilis Sant Marcel zo bet digoret. Ar barrez-ze zo unan euz ar re ma en doa ar c'holera great muia distruch enho bete neuze. Hogueu dioc'htu ar c'hlenvet so eapet, ha n'en deus scoet couls lavaret den er barrez-ze aboue. Ma carfe da viana ar voapaerien digueri ho daoulagad o velet kementse, ha dont da zonzal eun nebeut e talc'h Doue ar vuez hag ar maro etre he zaouarn, hag e ro an eil pe eben ervez ma plij gantha! Ma carfent dreist oll dont da zonzal ez eo ar c'hlenvejou-ze goaligner a gastu, hag eo hi dre ho dizurziou eo a denn ar goaligner-ze var ar c'harter, var ar vro, o lacat evelse castiza ar re zivlam var eun dro gantho; ma sonchfent e teufe c'hoas stancoc'h ar goaligner-ze panefe pedennou hag oberou mad ar gristenien fidel, e sonchfent neuze ive marteze eo dezho e ve harpa breac'h an Aotrou Doue o tistrei outhan hag oc'h en em lacat da viret guelloc'h he lezen. Mes nan; an dud ep relijion a zalc'ho ato da gaketal.

Ha pa deui eur voalen bennag da boueza varnezho, neuze, strafuillet, e vezint ar re guenta o eria; neuze marteze en em guemerint adarre oc'h ar re vad defot na ziabennont coler Doue. Defot na reont pedennou, processionou evit pelhaat ar voalen euz ar c'harter. Hi ho unan avad ne glasant ober netra, ne zontint ket zoken eo hi o deus lakel ar voalen da zont er c'harter, hag evit he lacat da eana, ar c'henta, na o delfe da ober eo eana da bec'hi.

Hon Tad Santel ar Pap, an diveza guc'h ma zeo bet en em zestumetar Cardinal en dro dezhan, da lavaret eo an ugent a vis Guengolo, en deus great eun brezoune hag a gavomp scrifet hed ha hed e meur a gazeten. Er brezoune-ze ar Pap en em glem euz a zispac herien an ilis, euz ar re o deus lamet digantha he stajou hag a ra ar brezel d'an ilis santel. Condaou a ra eul lezen, dougnet gantho o clase rei guir da alouberien madou an ilis. Discleria a ra ne deuz al lezen-ze talvoudeguez ebet ken nebeut ha meur a lezen all bet dougnet diarag a enep guirion Cador Sant Per.

Lavaret a ra goudeze tefe enebourien an ilis crena, ec'h ellont beza sur e teui Doue d'ho c'hastiza ma na distroont outhan gant eur guir guenez ha ma na reont ho galout evit disteleur d'an iliz ar pez o deuz alouberien diarag he c'houst.

Ar Pap a goms neuze euz a draouha ne dai ket da veza merket er gazeten-ma, hag en em glem euz a distruj ar C'hardinal Altieri maro divar guis siquun he zenet scoet gant ar c'holera.

Ar c'heleier ne dint ket oll abouenn Brema euz eur pennad, ar c'holera a grogad al zoni e Escopi, Constanfin, en Algeri, e tu an oll vrezel, tost an goulouh braz hanvet Sahara. Epemzoug dez ar c'hlenvet endda sammet eis cant enza d'ar vro, ha euz an tistrei euz an europidi, euz a bemp cant ma emant en hanten-ze. Ar veleien hag ive kement a so eno evit gouarn ar vro a reaz oll ho dever, ha gozig oll ive e testumjont ho maro.

ar dachen ar vrezel o renta sicour d'ar re glan.

An Aotrou Bonner, person Biskra, oc'h en em velet scoet gant ar c'hlenvet, a scrifas da Goustantin da c'houlennas mont. Evithan da gaout tri bloaz ha tri gquent, en em lakeaz en hent. Rei a reaz he zaeraman-chou diveza d'an Aotrou Bonner; he gorf a gasas d'an donar, hag e voue scoet he unan eun derveziou bennag goude. An tad Burjet, evel n'en doa beleg ebet eno da rei dezhan he zaeraman-chou, a reaz he zouguen d'an iliz en eur gador, hag eno e kinnigaz he vuez da Zoue, hag e pedaz eur pennad mad. Goudeze e voue laket en eur c'har evit he gas c'huec'h leo varnuguent ac'hano, mes abenn ma tigonezas edo prest da dremen. Clasc a rejor eur beleg. An tosta a voa seiz leo anter ac'hano; caer en devoue dont buhap, oa maro an tad araog mac'h erruas.

A neuze goude Doue a guemeraz truez oc'h an dud paour-ze. Ar c'hlenvet a eanas. Ar pez a zicouraz eas ar c'hlenvet kuit oue ar re a c'houarne ar vro, a reas da dud Biskra en em denna hini ama, hini ahont er menezioù evit caout guelloc'h car ha miret na spegie ar c'hlenvet enho dioc'h ar re all.

Keleier an Abyssini ne dint ket laouenoc'h. Eno ez euz eun impalaer hanvet Theodoroz hag en deus distrujet c'huec'h iliz ha daounguent; eun arc'hescop a zalc'h er prizon, hag ive eur zaos bennag. Ar re-ma a c'hour-drous ober brezel dezhan; calz euz he zujidi a zao en he enep. Lod anezho a dro d'ho dezhan, hag en em laca a du gant he enebourien; ar pez hen laca goassoc'h goaz e counnar, hag a ra dezhan devi tiadou tud abez ha zoken kerion pa gaf dezhan en deus leac'h d'en em zisfi-zhout anezho. E lec'hiennou n'en deus lezet e buez nemet ar merc'hed hag ar yugale. Ez eo gouzout n'ema ket ar gristenien en ho fijadur er vro-ze.

Etouez ar zaononet avad e kendalc'h ar guir feiz d'en em skigna. En dez-all e comzet euz eur ministr pe veleg saoz, eur prezeguer caer ha brudet euz a Londrez a voa en em c'hreat catholic. Hirio e leverer eo distroet d'ar guir relijion an arc'hescop saoz a enezen Malt. Comz a rer c'hoaz euz a drivac'h dijentil saoz a dle er sizunveziou-ma en em denna d'ar gouent. Lod anezho so ganet a guerent catholic, lod all o deus kuiteat ho fals relijion. Euz ar re-ma, daou pe dri a ioa ministrad pe beleien saoz. Unan anezho a ioa eun ofiser euz an dibab. Ouspen an anter anezho a ziles madou braz evit mont d'ar gouent. Setu petra lavar eur gazetenn a Vro-Zaos.

Setu ama eur gwentel evit ar re a guemer levrion pe gazetennou fall da lenn. Eun noter divar ar meaz a lenne abaoe eis vloaz unan euz ar c'hazetennou-ze a Bariz a ra ar brezel d'ar relijion. Dont a reas da glenvel, ha neuze e teuas keuz dezhan da veza heuillet ar c'henteliou difeiz a gavel en he gazetenn. Distrei a reaz oc'h Doue hag en devoue eur maro christen. Pa voa maro, he intanvez a scrifas d'ar re so e penn ar gazetenn ar c'homzou-ma:

« Collet em eus va fried. Hoguen va glac'har, oc'h

he goll, a so bet scanveet calz, o velet ar c'heuz en devoa, en he amzer diveza, da veza heuillet ar c'henteliou a roac'h dezhan en ho cazeten. Evel ne deus mui, a drugare Doue, nicun etouez va zud-hag a heuilfe kenteliou evelse, ho pedan (ha eana da zigas ho cazeten ama. Tri mis paer em eus, mes lezel a ran an dra-ze ganeoc'h a galon va.

Ar re so e penn ar gazetenn-ze a gasas d'an intanvez ar pez a ioa dlet dezhi, en eur ober goab hag o lavaret o devoa beleien ar barrez-ze great eun taol caer o tenna ene eun noter euz a grabanou Satan.

Hoguen ama ne ket a veleien nag a draou-all e voa meneg. Guelet a rer epken penañ ar maro pa dosta a ro sclerijen; ha pa na ve chomet en eun ene nemet eun enlfennig feiz, an eulfenn-ze a zao neuze buez enhi, ar more'hed a den da grignat ar goustians, da lacat an den da anzaoz eo faziet divar an hent mad, ha da gaout keuz da veza heuillet kenteliou control da lezen ar barner ma zao red brema mont dirazhan. Euruz c'hoas da viana an hini a jom gantha feiz avoalc'h evit ober an distro-ze en he amzer diveza, goude beza, epad meur a vloaz, contamet he speret hag he galon o lenn levriou ha scrijou difeiz!

N'eus ket pell on doa lavaret e voa deut ar c'helou euz a varo eun escop missioner euz ar stajou unanet en Americ, an Aotrou Lamy, lazet, a lavaret, gant an dud gouez, hen, ar veleien hag ar c'hoarzet a iea gantha euz a Frans d'he visson. Lavaret a reamp ive ne voa ket sur ar c'helou-ze. A drugare Doue ne ket guir. Setu ama eur pennadig euz eul lizer dent abaoe digant an Aotrou'n Escop Lamy.

« Setu ni digouezet e Santa-Fe, goude beza, gant calz a skuisder ha var var euz hor buez, beachet epad daou zervez ha triuguent a dreuz plenennou pe donarou compez. Epad an antercant leo guenta an amzer a ioa armenoc, hag on eus bet glao dalc'h mad. Epad daounguent leo all eo deut ar c'holera d'hon skei hag en deus sammet meur a hini. An dud gouez so deut diou vech da stourm ouzomp, hag an eil guech ar vrezel so padet teir heur. E kement ha m'am eus gallet gouzout, an dud gouez a ioa var dro tri c'hant anezho, oll kezeg mad dindanho; hag e crient hag loskent ho zennou en eur vont d'an daou lam. Ni on doa var dro cant den armet. Dioc'h eun tu e voamp difennet gant eur ster, ha dioc'h eun tu all on doa laket kirri da ober eur c'har en dro deomp. Petra bennag ma coeze a vechou ar boultji ker stang hag ar grizil, a drugare Doue n'eus bet lazet nicun ac'hanomp; unan bennag epken so bet gouhet. Ar re c'houez o deus collet c'huec'h euz ho fennou bras; meur a hini all credabl so bet tizet c'hoas.

Eun den iaouang a ioa ganeomp, o vont d'ar Mexic nevez evel d'omp, a zo maro gant ar c'holera epad ma vrezelecaemp oc'h an dud gouez. Ar iaouanca euz a c'hoarzet Loret a so maro ive. Coezet oa clan gant he aonn hag he strafuil epad ar vrezel. Evelse Doue so deut d'hon ampron en hent; hoguen digouezet omp brema e penn

hor beach. Ar c'hoarzet all so oll iac'h. Ar re so deut ganhen euz a du ar sao-heol so bet laouen braz o tigonezout dre ma o deus cavet ama guelloc'h evit na, esperent caout.

Guengamp. — En eur gazetenn hanvet (*L'Echo des Côtes-du-Nord*), e cavomp eur pennadig scrit divar benn ar brinsez euz Franza a Amboaz. Roet on eus buez ar brinsez e Feiz-ha-Breiz. Ama e roer ive ar vuez-ze e ber gomzou, ha goudeze e leverer:

« E-touez kerion Breiz n'en deus hini e-bed hag a dle « muioc'h enori Franza a Amboaz evit ker Gwen- « gamp, pa-ze eo gwir eo eno e deuz, e-pad eiz vloaz, « douget he c'hoaz, ha gouzanved ar brasa poaniou « gand eunn ners-kalon dispar. Rag-se ann Aotrou Es- « cop Zant Briek ha Treger en deuz roed da c'houzoud « d'oll dud he eskopti e teuje er bloaz-man, ar bemped « a viz du, da Wengamp, evit ober ar gwel kenta euz a « Franza a Amboaz: hag enn deiz-se eul loden euz a « relegou ar Zantez a vezo laket war eunn tron kaer ebars « iliz Gwengamp, evit beza enoret gand ann oll. Muia « a dro ma vezo gallet a vezo rod d'ar gwel-ze; ha « Gwengampiz a bed ho c'henvroiz Breiz-Izell da zont « gant-ho da enori ann hini a zo bet ho mestrez gwech- « all, hag a vezo breman, goude ann Itron Varia Wir- « Zikour, ho satronez brasa ha muia karet.

An oll vretened o deus mall da velet ar brinsez euzus-ze laket e reng ar zaent. G. M.

HISTOR ZANTEL

TENNED DIVAR LEVR ANN EKOD.

(EIL BENNAD VAR-N-UGHEM).

Moizes a ghennig lezennou Doue d'ar bobl, hag ar bobl ho c'hemer. — Kevredighez etre Doue hag ar bobl.

Doue a lavaraz c'hoaz da Voizes: goude ma ho pezo kasset va lezennou-reiz d'ar bobl, c'houi a bigno adarre da gavout ann Aotrou, c'houi hag Aaron, Nadab hag Abin, hag ann dek ha tri-ughent den koz hoc'h euz lekeat da c'houarn ar bobl, hag ec'h a joret euz a bell. Moizes hepken a bigno beteg ann Aotrou, ar re-hont na deut ket fost d'ezhan, hag ar bobl na bigno ket zoken oue h'treid ar menez.

Moizes a zeuz eta, hag a zatevellaz d'ar bobl holl gomzou ann Aotrou, hag he lezennou-reiz; hag ar bobl holl a respontaz enn eur vouez: Ober a raiamp ann holl draou en deuz lavaret ann Aotrou.

Moizes a skrivaz holl lavarion ann Aotrou Doue, hag ann dighemer mad great d'ezho gant ar bobl, hag evit siella ann akord pe ar ghevredighez-se etre Doue hag ar bobl, e oe great eur zakrifiz. Antronoz mintin mad, Moizes a zavaz eun aoter ec'harz troad ar menez, hag en dro d'ezhi daouzek mean-test, hervez daouzek meuriad ar bobl a Israel. Hag e kassaz tud iaouank euz a vugale Israel, hag e rejont sakrifisou e pere e vez devet holl kik ann anevaled, ha sakrifisou a beoc'h d'ann Aotrou, o laza leueon enn he enor.

Ha Moizes a ghemeraz ann hantel heuz ar goad hag hel lekeaz ebarz hanaffiou, hag ar pez a choumaz e skuillaz anezhan var ann aoter. Hag o kener levr ar ghevredighez, (da lavarout eo ar lezennou a bere heuz euz komet, hag assant ar bobl) e levez ar levr, se dirag ar bobl, pehini o veza he glevet, a lavaraz: Ober a raiamp ann holl draou en deuz lavaret ann Aotrou, ha senti a raiamp out-han.

Neuze Moizes a ghemeraz ar goad hag hen taolaz gant eur sparf var ar bobl, hag a lavaraz: Hema o goad ar ghevredighez en deuz great ann Aotrou gan-ehoc'h var ann holl draou-ma hoc'h euz glevet ha gulet.

(An akord pe ar ghevredighez-se a c'haver ann Tose tamant koz. Moizes a reaz diou loden euz an dud a lloened lazet enn enor da Zoue, unan euz Doue o c'hou evit ar bobl. Loden Doue a oe skuill he tannou ebarz ziskouez e skuille Doue var ar bobl ar madou castrom promettet ma vije ar bobl fidel d'he lezen, loden ar bobl a oe taolet gant eur sparf var ann holl Israel, ha ziskouez en em garghent da virout d'he lezen.)

Goude ar zakrifiz, Moizes hag Aaron, Nadab hag Abin hag ann daouzek den ha tri-ughent den koz hoc'h euz krec'h ar menez, hag e velont Doue Israel, ha dindan he dreid e oe eun dra bennag hervez d'eur pezh labour great gant mein shpir hag euz euz ann Doue pa vez kaer ann amzer. (Nevel jout her Doue d'ent o d'ent, hag evel maiz eo, mes ne velont a rejont a c'houi euz gallout lavaret dioc'h bobl si gulet holl dud ann Doue gand pehini hon euz great kevredighez. Mes ma heljont hez lavaret petra gane heljont portrezi nomet ar pez a o dindan he dreid.)

Hoguen ann Aotrou Doue a lavaraz da Voizes: pigui beteg em-oun var ar menez, ha choumit eno; hag e rouin d'ehoc'h taolennou mein, hag al lezen hag ar gourc'hemennou am euz skrivet, evit ma ho deskot d'ar bobl.

Moizes ha Josue he zervicher a zavaz eta da vont huelloc'h, ha Moizes a lavaraz d'ar re koz o tiskouez d'ezho ar c'hamp: gortozit aze ken da zistromp a he kavout. Beza hoc'h euz Aaron hag Hul, gan-ehoc'h mar sav eun difficulte bennag, kassit ar goz diraz hez ha grit dioc'h ho barnedighez.

Ha pa oe piguet Moizes, eur goumoulen a c'houlaz ar menez, ha gloar ann Aotrou Doue en em ziskouez var verez Sinai epad c'houec'h devez, e deare eun lan, rug-glaou pehini a zave var lein ar menez, e gvel holl vugale Israel. D'ar seizved devez, Doue a c'haraz Moizes euz a greiz ar goumoulen, ha Moizes, o leusket Josue eleac'h m'edo, a dreuzaz ar goumoulen a bignez var lein ar menez hag a choumaz eno gant Doue daounguent devez ha daounguent novez.

(Eno ann Aotrou Doue a noz diezhan he digon da varbenn lidou he relijion, ha lidou-ze pe ar bremaen ar pez a dle c'hoarvezout e relijion Jezuz-Kristus.)

(Eur pennad all eur vech all.)

SKOL KEROUAZEC (guez-hal Trevarcz)

Ar C'honsel c'haer, e departamant Finister, da c'houzout: 1. Penaoz eo dalc'het Skol Kerouazec...

Setu ama an aotronez a bere eo bet savet ar C'honselze er bloa-ma: Rabot, a Gonsel ar Prefet, evid an Aotrou Prefet...

Evel hon euz-han lavaret, daouzec skolaer nevez a helleur da ziguemeret bep bloaz, e Skol Kerouazec, evit netra...

- 1. Salion (Rene) a Blouigno. — 2. Boedec (Rene-Ivon) a Guernevel. — 3. Fanglez (Loiz) a Voelan. — 4. Draoulec (Ivon) a Driagad. — 5. Brochec (Loranz) a Gastelnevez. — 6. Braz (Francez) a Leuhan. — 7. Tanneau (Lois) a Benmarc'h. — 8. Nicolas (Anj-Mari) a Veillavern. — 9. Moal (Francez) a Huelgoat. — 10. Kere (Rene-Ivon) a Doure'h. — 11. Rivier (Caourintin-Loiz) a Vannalec. — 12. Berthou (Francez-Mari) a Riec.

An daouzec skolaer-ze a renco beza diguezet e Kerouazec d'ar bevar a vis du. Ma teuffe unan hennag anezho da vankout, e vezo kemeret dre renk, unan euz ar 6 a zo ama varlerc'h.

- 1. Ar Goc (Maze) a Sant-Thurien. — 2. Cneff (Ivan) a Blouenan. — 3. Mahe (Rene) a Lanneur. — 4. Page (Francez) a Blouigno. — 5. Cariou (Loiz) a Loctudy. — 6. Guillou (Guillou) a Sant-Yoazec.

Euz an daouzec diguemeret varlene evid ober ho bloavez guenta, setu ama adare dre renk, an eunneg resevet evid ober ho er bloavez:

- 1. Grall (Francez) a Leuhan. — 2. Olivo (Loiz) a Gastelnevez. — 3. Derout (Guillou) a Vannalec. — 4. Cornic (Jan-Mari) a Verrien. — 5. Dagorn (Ivan) a Lanneanou. — 6. Sinkin (Bertrand) a Vannalec. — 7. Fich (Per) a Vannalec. — 8. Duigou (Francez) a Scaer. — 9. Jaffret (Francez) a Scaer. — 10. Keau (Ivan) a Vengad. — 11. Brangolo (Jozef) a Gloar-Carnoet.

- Hanoiou skolaerien an holl bloavez, resevet evid ober ho zivret bloavez: 1. Ar Roux (Andre) a Leuhan. — 2. Hourmant (Ivan) a Gollonec. — 3. Duigou (Ivan) a Edenn. — 4. Dantec (Ivan) a Gollonec. — 5. Ar Ber (Jakez) a Sant-Ian-Trolladmon. — 6. An Treut (Olier) a Volazec. — 7. Bihan (Alan) a Scaer. — 8. Marc (Paul) a Blouenan. — 9. Dreaun (Alan) a Laz. — 10. Ar Scoul (Alan) a Goray.

Hanoiou, dre renk a virid, skolaerien an drede bloavez ho deuz bet ho Diel (pe ziplom) a labourerien douar:

- 1. Faude (Ivan-Mari) a Blougastel-Sant-Germen. — 2. Allain (Per) a Goray. — 3. Guifuez (Jozef) a Guernevel. — 4. Lety (Caourintin) a Blonciz. — 5. Stervennoff (Mikeal) a Leuhan. — 6. Pesrez (Ivan) a Guernevel. — 7. Burel (Ivan) a Scaer. — 8. Thomas (Ivan-Francez) a Rosnohen. — 9. Corlier (Per) a Goray.

Skol Kerouazec a zo dalc'het ha blemet gant an Aotrou Loiz Kerjegu, anavezet gant an holl evit beza eun den euz ar re zesketa var guemend a renker da c'houzout ha da ober evit labourat an douarou, hag ober d'ezho renta muia hag ar guella e pep seurt goundeguez.

An Aotrou Kerjegu en deuz tud euz ar re voesta d'her sicour.

1. Eur belec santel ha desket, an Aotrou Bozec, person coz Sant-Goazec. Ar belec venerabl-se a lavar an oferen, bep sul, d'ar skolaerien, ho e hovez bep daou viz, a brezac d'ezho aliez var ar pezh a die pep kristen da c'houzout ha da ober, var ar vertuziou a die diguerner e kundu al labourerien douar, hag an techou fall a here e lleont tec'het.

2. Daou zen iaouank desket hag a skouer vad an Aotronez Clec'h, daou vreur, a zo ivez o sikour an Aotrou Kerjegu.

Ar c'hossa euz an daou vreur-ze a ra skol — var ar pezh a renker da c'houzout: evid anaout mad natur an douarou ha tenna out-ho pep seurt goundeguez, — evit sevel ar stuion goesta hervez an douarou, hag hervez al lec'hioù, — evit dere'het an honchou, a diecun da zerc'hel e pep tieguez dalc'het mad, — evid oher an douar lennou chifr dre bere e teuer a benn galc' essoc'h ad vuzuli an douarou, hag an tammou douar garre, rond pe gornec.

3. Ar iaouank euz an daou vreur Clec'h, a ra skol var ar pezh a zo ret da c'houzout evid an prajeier, al liorzou hag ar jardinou. Desko a ra douara ar prajeier resech, dizourra ar prajeier, a diecun em eur guer, ober foenneier talvoudec. Dbski a ra labourat al liorzou, ar jardinou, — ober an daili, — greffa hag ekusson, — heull ar stu an talvoudec evit goumit al lugumach, hag al lugumach caera ha goesta da deuleur had.

4. Eur mestr-all, an Aotrou Duigou, a zo c'haer, a hen, da heullia ha da vleina ar skolaerien en ho labourou, evit deski d'ezho penaoz en em guemeret evid ober

ar guella labour. Nese do holl d'ho gouzout an guezad guella da ober, red eo, dreist pep tra, gouzout evit em gumeret. Nag a dud desket ha gouzout embrognetra!

5. El liorzou hag ar Jardinou, evit beza ive eur mestr a habil c'haer da zesketa diari skolaerien an douarou (diar) labourat.

6. Eur mestr ive, desket braz, an Aotrou Binet (Gou) Guemperle, a zen, diou vecl' ar zizun, da zesketa skolaerien Kerouazec, medisinez al louened, hag an doare da anaout ar merkou mad hag ar siou fall a hell beza enho. Euz tec mad n'hell ket beza dizek e kement-ma. Gouzout anaout eul louen kezek mad euz unan fall, eul louen-korn mad euz unan fall, a zo eur zoursen a binvidiguez evid euz tec.

Goude kement-se ne ket red d'comp lavaret ez eo Skol Kerouazec, eur skol euz ar re dalvoudeca e departamant Finister. Evise ive an holl dud a skiand, an holl dud fur a zo leun a anaoudeguez vad e kever an Aotrou Kerjegu, abalamour m'en deuz consacret he zescadurez, he amzer, he vuez da eun henvelep skol. Gand ar madou braz en deuz en divije gallet caout eur vuez digouanussoc'h, hag ober netra, evel calz re-all paour e h egnel-han. Mad a ra, ha ma carfe ar re ho deuz descadurez ha madou evel-t-han heull ho skouer, ne ve ket kemend a zouarou didalvez en hor bro, departamant Finister a deuffe da veza an antier pinvidicoc'h.

Ar C'honsel arak dispartia en deuz roet d'an Aotrou Kerjegu ar mouleniou dleet d'ezhan, da guenta, abalamour d'an aked gant pehini e talc'h he skol, hag abalamour d'ar choaz en deuz great a vistri ken desket ha ken skoueruz. Mar dint iaouank a oad ez int coz a zescadurez hag a furnez. Ra guendalc'hint da vale var an troad ho deuz baleet er bloaz tremenet, hag a benn eun nebeut bloavezion e vuzo guet a bep tu en hor bro, tienien habil ha vertuzuz.

AN ABAD ALEXANDR CHALOUNI unan a vemprou ar C'honsel.

Pardon Sant Mikeal, e Lesiteven.

Ar pardon de Breiz-Izel, a zo euz d'ar hag a laca calone peh-unan da d'ar e emeur barrez pa h'em gav deiz ar pardon peh-unan a zo gas ar lizez a zo kempennet en d'ar hag en d'ar vecl' ar penn-tiek, he bried hag ho bugale a zo goude ho haera guiseamand en ho c'herc'henn ar guerend diavez-parrez hag an anaoudeguez vraz a euz en deiz-ze ken ewit d'ar emeur parrez adveuez ar bobl, ken evit en em embettid arozant pe d'ar zantez Patron euz an barrez Mezmars d'eo l'ar, deiz ar pardon, al levenez a gav ar guerehils hag an anaoudeguez oc'h en em velet, eo brassoc'h e hoaz adedidi a gav ar bobl o ta rempnet an lizez en deiz-ze. Til Doue ive, a zo kempennet an moguerion a zo fresket an aoterion a zo peintet ha Roue an Envi hag an douar diskennet en tabernacl, a vel en dro d'ez-han abepatu bokedou ken caer da sellat out-ho, ha ken mad da e houessat, an a roont d'ar gris-tentier bed-man, an tanya euz joasted an Envi, hor

An traou-ze holl a veler e pep tra d'ar m'hoz Lesneven er bloaz-man, euz goulet traou caeroc'h e hoaz: eur prins euz an lizez euz are hescob zant ha savet e Breiz, an Aotrou Testard, a n'em gave er vro, deut da ober eur bale evit sevel beleien iaouanc da vont gant-han da Haiti, he escopi. An Aotrou Kervenic, person Lesneven, en deuz bet ar sonjezon gaer d'hen pebi da ober he bardon er bloaz-man, hag an arc'hescob euz he goster, en euz aotret asant d'ar beden great d'ez-han. Euz an aoter evit cana an oferen-bred, ez-barret d'an Aotrou n'Escop da avieler ha da abostoler, daou veleg iaouanc, an aotrounez Argonal ha Bihan, a die prestig d'ezel Breiz evit mont ive da Haiti da brezeg an avieler d'ar vortant. An Aotrou Saout, kure Plouider, a bignaz er gader, hag a gomzaz d'ar bobl euz rouantelez an Envi, en euz doare ken dudiuz, m'a lekeaz calz da oher da rede d'ar deir heur goude creiz-deiz, an arc'hescob a gahaz ar gousperou, ha da c'huoc'h heuz an noz, ar Aotrou Keriel, person Kerber, a brezeg e gallet da euz ne demnad vad a gristenien skigner en eur vrettrezh hag un calz a vad en Escopi Kemper.

Lesneven's kerc'hoz hag an d'ar vortant d'ar vortant d'ar vortant, a zalc'ho sonet epad peh-unan euz ar pardon caer man.

LEVR AL LABOURER.

Klennvejou ar gwenan. — Penaoz ho farea.

Ar gwenan zo flemmus: ha n'euz loen all e-bed, A gounar evel d'ho pa vezint hegasset. Gand ho broud venimus int a lik hep truez. Hag a lez er goul ho benn gant ar vuez. Mar denont da gouza euz ar gwenan. (Bag ar gwenan ive ho deuz ho mision d'ar gwenan) C'houi hergwezo ez mad: ho liou ar c'henchel. Treut e vezo ho c'horf: ho zal vo rouffennet. Ho gwelout rer neuze, pell dioc'h ho ruskennou. Okass ho re raro hag oc'h ober kanyon. Pe staghet troad ouz troad ann eil re dioc'h ebenn. Oc'h chan hed an deiz, kroughet ouz ar varlen. Pe em gwelod ho zi, o c'houi hanter-goussket. Revet gand ar rhou gand ann naoun dizec'het. Klevout a rer neuze eur son trist ha freyoc'h. Ha gand ho drwasket int a fouet pouneroc'h.

Tost d'ar c'hoston neuze likit nevion vian. Karghet a vin sucret hag euz ar mel c'hwelan. Ar gwenan a dorro ho naoun hag ho sec'het. Int a ghemero nerz a gavo ar iec'het. Meur a vecl' ha pa vank a vortou da d'arza. E weler enn eunn taol, an d'arion o vrena. Ann d'arion en em skign buan, a red vel ar c'hen-gec. Hag e-berz koar ha mel er rusken a vrena. Evesat mad, goude munt ar gorerezed. Sionaz, vel ann eur bez, aies vo gweloc'h. Corfou brein o teurel eur blaz fall ha pouner.

Hag o tigass klenved, ma n'ho skarzit e-berr. Likit evez eta, ha netait ho ruskad, Ma na fell d'e-hoc'h gwelout ho kwenan o klanvaat.

Evit ne golfec'h ket ho kwenan gant klenved, Pidit Doue a galoun, ar zent ha sentezed. Ho enorit hemdez, hag emm ho fardonnou, N'ho dizenorit ket dre ho kwall' exemplou.

Hano ar Zient evit ar Sizun-ma.

- DILLUN, 21 Here. — Santez Ursula hag he c'henmerezet.
- DIMEURS, 22. — Sant Ian Canti.
- DIMERCHER, 23. — Gouel hor ZALVER pe hou das-prener.
- DIZIQU, 24. — Sant Raphael, Arc'hael.
- DIRGDER, 25. — Sant Gueznou, Escop.
- DISSADORN, 26. — Sant Alor, Escop.
- DISSUL, 27. — Ugentvet sul goude Pantecost. Ofis ar zul.

An abostol Iurio :

Va breudeur, bezit eveziant evit gullet penauz en em ren, ne ket evel tud diskiant, mes evel tud fur, oc'h implija mad an amzer, rag an dervezjou zo fall.

Na vezit ket eta dievez, mes pleustrit da anaout bolontez Doue. Ha n'ent em vesvit ket gant guin a zoug d'al liguentez. Mes bezit leun euz ar Speret Santel, ha comzit etrezoc'h dre salmou, himnou, ha canticou spirituel, o cana hag o salmen evit ment Doue, o trugarecat ato hag evit pep tra, Doue an tad en hano Jesus-Christ hon Aotrou. O senti an eil oc'h eguile dre zoujans evit Jesus-Christ.

Lizer Sant Paul d'an Efezianet V. 15. G. M.

AR MESSAER BERTELE.

(TREDE PENNAD.)

E kear e vez eun tam c'hoari, pa vez great he bask kenta gant eur buguel, o clasc gouzout pe seurt micher a vezo desket dezhan. Petra vezo ar paotr-ze? Eur c'here? eur c'hemenet? eur mansoner? eur c'halvez? eur c'heguiner? eur c'higuer? eur barrier?.... Pe seurt benveg a vezo laket dezhan etre he zaouarn? Eun nadoz? eur minaouet? eur noten? eur morzol? eur esken? eur vouc'hal? eur tavancher keguin?....

Var ar meaz ne vezer ket keit-ze o clasc eur stad a vuez da eur potrig iaouane. Bugale hon tad kenta Adam, Cain hag Abel a voue, a leverer, unan anezho labourer douar hag eguile messaer. Var ar meaz birio c'hoas ne anavezet nemeur nemet an diou vicher-ze. Da viana e Sant Palatin ne anaiet nemetho. Mam Bertele eta ne zonjas clasc micher all ebet d'he map nemet he lacat e servich eun tieg, evit eno beza casset d'ar parc da labourat, pe d'ar menezion da zioual al loenet. An contr en doa fermet he di dezho marc'had mad hag a voa eun

ozac'h pinvidic, chatal corn ha denvet dezhan a vandoou, her c'hemenet en he di evit dioual he c'heor hag he zenvet var ar menez. Ober a reas comanant outhan deg lur er miz, na ket ma vije goest Bertele da c'hounit kementse, mes an contr a voa eun den mad, hag a felle dezhan rei sicour evelse, evel dre guz, d'ar vam ha d'ar vugale all. Caout a rer, a drugare Deue, beteg var hor menezion, christenien vad hag a voar, ne ket epken rei, mes c'hoaz an doare da rei.

Bertele a iecas da di he contr antronoz gouel Maria anter east. An deiz-ze mam ha bugale a voa savet mintin mad, hag oll ez ejont d'an ofereng gant ar potrig araog m' em em lacaje en hent. He vam a iecas neuze d'he gas hag a roas dezhan he alion mad araog kimada diouthan. Lavaret a reas dezhan dreist holl caout ato sonch emalagad Doue o para varnomp e pep leac'h; ha mar cave poanuis beza dispartiet dioc'h he dud, pidi, lia pidi fermet rag ar beden a dosta an eil oc'h eguile. E c'hellit eridi ne deas ket dioc'h he map seac'h he daoulagad, ha Bertele a vouelaz ive druz o velet he vam o vont en dro.

An contr her c'hassas dioc'htu d'ar menez gant he loenet. Rei a reas dezhan ive meur aali; eneze e roas dezhan eur pezi ki hanvet Turc en eur lavaret d'ho hiz is. Er menez ne vezo nemedhout; mes n'as pe oon ebet Turc a voueze da zifen mad oc'h al loenet gouez hag ive oc'h an dud ma teufe unan bennag da hegal ouzit. Turc o clevet he hano a ziredaz, hag o velet ar messaer bihan e santas dioc'htu oa eno an hini a dlhe da heuillem Kerkent en em laca da ober lit da Bertele, da fringal ha da lamet en dro dezhan; evel p'en divije c'hoant da lavaret pe da ziskuez e plije calz dezhan he gamarad nevez.

Ar potrig a voa trist oc'h en em velet he unan er menezion gouez-ze, ha ne rea ket calz a van oc'h al lit a rea ar c'hi dezhan. Gouscoude o tont da zonjal er c'henteliou en doa bet digant he berson mad, digant he vam hag he c'hoar, e teuas da lavaret outhan he unan e voa Doue eno evel e leac'h all, hag e voa calz a vugale all euz he oad hag a voa red dezho ive ober an memes micher, chom da zioual al loenet pell dioc'h antiez. Ar zonch-ze a zigassas laouenidiguez en he galon, ha neuze en em lakeas da c'hervel he gui, da ober lit dezhan ive, ha da vont gantha da ober an dro d'ar vanden loenet a ioa fiziet enha.

Antercant penn danvad ha deg gavr ha triguent en devoa Bertele da zioual. Pa en deveze great an dro d'he vanden loenet, ha gulet edo pepilini en he reng, ez ea da azeza edoug eun duchen bennag eleac'h ma cave ar goudor hag an disheol, bag he gui hen heuille ato, hag a c'hourveze ec'harz he dreit. Eur blijadur oa gulet ar pez loen-ze, astennet var an douar, he benn gantha var he zaou bao araog, hag he lagad ato o para var an denved hag ar guevr. Mar sonje unan bennag tec'het dioc'h ar re all, kerkent Turc a ioa en eul lam var he lerc'h, hag ar penn danvad pe ar c'havr dizuch a rede da gaout ar vanden; ne c'hortoze ket caout eun taol dant; eun

harzaden a ioa avoalc'h evit he locat da zenti ha da vont d'he reng.

Bertele, evit en em zizenou, en em lakea da lavaret outhan he unan, lia cre, pe mar kirit, a vouez huol, ar c'hatekis, pennadou euz an Aviel desket dezhan gant person Sant Palatin, hag ive pennadou euz ar prezeguennou en devoa clevet gant ar beleg mad-ze. Ar potrig en doa eur memor euz ar re vella. Euruz oa n' en doa desket nemet traou mad, hag evelse ne gave brema da dremen dre he speret nemet traou mad, traou hag a greea ep he galon santimanchou christen, epad ma reant dezhan caout berroc'h an amzer. Siouas! an oll vugale n'o deus ket an heur vad-ze. Nag a bet anezho a ve sant man'o divije desket en ho bugaleach nemet traou mad, ha c'hatekis, canaouennou santel, historiou a skuer vad, hag a deu d'en em goll abalamour ma zeus bet desket dezho rimadellou divalo, soniou, canaouennou diot pere a daol divezatoc'h ar c'hontam en ho speret!

Nebeut a dra so avoalc'h evit nec'hi bugale; mes ive nebeut a dra so avoalc'h evit ho dinec'hi. Evitho n'eus ket pell etre ar c'hoarz hag al lenv, pe etre al lenv hag ar c'hoars. Bertele en doa goulet dioc'h ar mintin, he galon a ioa bet eun tamic mantret; hoguen araog an noz oadher contant euz he zervez, he galon a ioa ker carguet a laouenidiguez man'len divije ket troclet he vicher oc'fr an den eurussaz o ebet. Turc a blije kement dezhan ma'non divije ket he droclet oc'h an oll draou caer so bet ep bloa ma o tiskuez e Paris. He laouenidiguez a badas pemzeg dez. Evelse abenn ar pemzevet devez o veza bet lezet da vont da velet he vam, he vreudeur hag he c'hoarezet, e c'hellas lavaret dezho gant guirionez en em blije meurbet en he venezion, ha n'oa roue ebet var an douar ken euruz hag hen. Siouas!... Mes gortozomp, ma livirimp pep tra d'he vare.

Ar messaer iaouane a ioa eat, evit an drede sizun, d'ar menez gant he loenet, hag a zonje dezhan e chomje da nebeut daou pe dri bloas da ober ar vicher-ze. Eun devez edo gouvezet var al leton e pleg eun duchen. An heol a voa oim, hag er c'horn pleg-ze e cave dizheol ha frescadurez. Setu pa zonje nebeut, ma cavas dezhan gulet, a zioual he benn, evel skeud tud o tremen dre voasc'at reien, dre voascou ken stris, ker moan ma e divije beac'h eur c'havr o tremen dre eno. Sevel a reas var he gopeledou, hag e velas nerze splam eur rencad tud, gantho var ho c'heir sior leun, ha ne ket p'lous, credabl, a ioa oc'h ho c'harga. Cripa a reant an eil var lerc'h eguile dre eun doare goasc pe kan hag a c'halvet tout an aeret. An dud-ze a iqa gantho tocou ledan a ziskenne da c'holo, ho bizach, ha ne allet gulet nemet ho haro a ioa hir da fale'hat. En dro d'ho c'hroas-lez ez oa gourizou ruz, hag e goasc ar gourizou-ze e velet o luguerni treid contellasennou ha pistolennou, ha peb a luzil a ioa a ispill oc'h ho diousoaz. Bertele a jomaz estlamet oll o velet an dud-ze.

G. M. (Eur pennad-all divezatoc'h).

K E L L E R

An Aotrou Faye, vikel e Recouvrans, hag hanvet person Ploegat-Moyan.

An Aotrou Bodeur, vikel e Kerher (Sant-Pol-Quiberon) so hanvet person Loqueffret.

An Aotrou Morgant, vikel e Sant-Vaz Montronlez, so hanvet vikel e Recouvrans (Sant-Salver Brest).

Hervez ar c'hazetannou, meur a zouav euz a arme ar Pap, deut da ober eur bale elouez ho zud, a ia a brez en dro da Rom.

Var dri c'hant unan den iaouane recevet er bloa ma evit scolack Sant-Cyr, ar c'henta recevat, so eur hanton hanvet Renan-Eozen-Mari Jacquet du Boisrouvray.

Ar c'henta prim evit al labou' douar en arroudisse-mant Kemper, so roet er biba ma da Bed Meillon, hag a Ergue-Armel, hag an eil d'an Aotrou Malgant, hag a Veuzec-Conc.

An Aotrou Revault, a ioa e penn lezvarn ker Kemper, so hanvet aler e lezvarn Brozou, hag en he leac'h e teu da Goumpier an Aotrou Godesbe du Belle, a ioa penn lezvarn Paimboeuf.

Var an hent liouarn, er c'houarn ha Vitnel, eun tenn en deus dihorret, diout euz eun beac'h als dez, an ne gil rene an tren so he goal, hebet daou an de ha blavez eun all. Ar vachourien n'o deus ket bet a zroug. Eur vaonez epken, so bet glozetad us bet us eno.

Er sizun-ma ez eus bet adarre tan goall e Daoulaz, e Castel-Paol, e Plouider, hag e maner Lezardean, e kichen Kemperle.

Ar re zo goneziec euz an doare da ober chist, a lavar ez eo guelloc'h calz an douar euz ar steriou pe euz ar voazion eguet an douar euz ar teuntenn pe euz an eienen.

Ar goan a deu abred e lec'hiennon. Er sizun drement ez oa erc'h var ar menezion a Brost da Lyon hag e carteriou all. Cazerennou Brozaz a velle da erc'h euz ive hag oa scornet an douerier.

An ed zo eat adarre var guelloc'h erc'h euz Brost da Meziou. Gouscoude ne deuz ket izoum da gaout an armar ve nacuniguez pe dienez o Frans ar bloa ma comant ar c'huz heol ez euz ed du hag a soleser ar paol, led antevriou all ez euz euz bloavez mad a vuz, hag a pep leac'h ez euz avalou douar enostlamant, so ar goudor euz ab souv.

Ar gurun so coezet e gar Sant-Brieuc, var an telegraf electric, hag e deuz irezet lod euz an orjal. Ar hano eo eat, pe da viana coezet ep ive var tour iliz Morieux, hag e deuz distrujet an tour abez.

En iliz Sant-Marc, er c'henten Brest, eo bet anavezet er sizunio-ma Daou gaol e deus digoret, ha casset gantha ar peza ioa enho. Guelet ar rer euz ab da zioual oc'h al laeron ilizou.

en doa ar messaer bihan eo na denje eun aer bennag euz a voasc ar vein a ioa a zioc'h ho fenn, d'en em droidella en dro dezhan evel ma reant en dro da zivesker ar mul.

Stad Bertele ne alle ket eta beza calz truezussoc'h. Astennet var guezin ar mul ep gallout finval ac'hano, divar c'horre en doa aoun rag an aeret, dioc'h an traon en doa aoun rag an toullou long. Glac'haret braz oa da veza collet he gui; naotin ha sec'het en devoa; ne vouie ket peleac'h her c'hasset na petra vije great dezhan. He c'hlae'har hag he anken a greske. e'hoas calz o sonjal oa chomet he zenvet ep den d'ho dioual, o sonjal pebez rann galon e divije he vam pa glefje e voa eat he map ne vouie den peleac'h, calonad hag a ioa guest da rei ar maro dezhi.

Bale a rejont evelse epad pemp pe c'huoc'h heur da nebeuta. Eun anter heur araog chom a za, toul an aeret a deuas c'hoas strissoc'h. Ar vein a ioa bolzet azioutho en hevelep doare ma voa red tremen e guirionez dre eun toul dindan an douar. Neuze e voue red distaga Bertele evit he lacat da yale, hag ober d'ar mul mont var bennou he zaoulin. Evelse ar potr kez a voue great dezhan mont da heul ar re all var he grabanou pe ec'his ma c'helle. Ken terval oa ma ne velet banne en toul du ma kerzent dreizhan.

Pa deujont euz an toul-ze, ha pa eljont guelel an deiz adarre, en em gavent en eun doare flourer striz, meneziou huel oll ho var dro dezhi. Ero edont evel e gouelet eur puns down. Al riblaeron n'oa bet gire gantho epad ar veach, hoguen neuze e callont ar prezeg.

Kenta a rejont oa dizamma ar mul, ha tenna eun dors vara du hag eun dors fourmach gavr, hag eur soroc'hel vras great gant croc'hen bouc'h ha tenn a vin. Neuze en em lakejont var an douar, e kelc'h, evit ober ho fred. Bertele en devoe ive eun tam bara hag eun tam fourmach, etach avad ne voue ket roet dezhan. Gouscoude evel ma voa dare gant ar zec'het, e c'houlennas da eva, rag ne alle ket treizia he vara ker sec'h oa he c'houzoug.

— Guelha te gavo dour aze eun tu bennag er flourer, eme unan euz ar riblaeron. — Epad ma edo o clasc dour, e savaz he benn da zellet en ear, rag, evel oneus lavaret, eno edont evel e gouelet eur puns, hag e cave dezhan guelel tud o sellet outho dreist beg an terguin huel a ioa en dro d'an toul doun-ze ma edont enha. Hoguen evel ma voa noz neuze, ne alle ket beza sur avalc'h euz ar pez a vele.

Etre daou gouscoude ar riblaeron ne gollent ket ho amzer. Ar soroc'hel a iea en dro ep eana, euz a dre divrec'h unan etre divrec'h eun all, ha pephini anezho a zache varnezhi a zoare. Hoguen dre ma zea en dro, e lakea ive ar gaoz da zavel erroc'h crea. Lod a loske malloziou var an heul tenn a voa red dezho da ober evit tec'het dioc'h ar vatouterien, lod a fonguee ar varc'hadourez a gasent e Spagn, hag a gonte peguement a die pephini da gaout d'he lod, eun all a c'houlenne petra rajent gant ar messaer bihan-ze. Doa sammet da zigas gantho. Divar greiz ar vatouil-ze, setu an tennou o crozal azioc'h ho fenn, hag ar houllji o vont en eur zatal ebien

d'ho discolarn. Bullan e sarjont ho daoulagad; tro var dro d'an toul ma edont enha, e voa soudardet azioutho.

(*Eur pennad-all eur vech-all*). G. M.

Hano ar Zient evit ar Sizun-ma.

DILUN, 28 Here. — Sant Simon ha Sant Jud, ebestel.

DIMEURS, 29. — Sant Clet ha Sant Marcellin pabét ha merzerien. (Euz ar 26 Ebrél.)

DIMERC'HER, 30. — Sant Neree hag he guenverzerien. (Euz an 12 Mae.)

DIZIQU, 31. — Santez Mac'harit Rouanez. (Euz an 10 even.)

DIRGUENER, 1^a Du. — Gouel an oll Zient.

DISSADORN, 2. — Gouel an Anaoun.

DISSUL, 3. — Kenta sul vammugent goude Pantecost. Gouel ar relegueier Santel.

An abostol Iario :

Neuze an dud just a zavo gant eun hardiziegnéz vraz a enep ar re o devezo great poan dezho, hag o devezo lamet digantho ar frouez euz ho labour.

O velet kementse, an dud fallag' a vezo strafuillet; crena a raint gant ho encrez; sebezet oll e vezint en eun taol o velet, pa istiment bihana, ar re vad salet. Lavaret a raint outho ho unan gant calz a c'hlae'har, en eur huanada, ha mantret ho c'halon. Setu aze ar re a reamp goap anezho guechall, hag a guemeremp evit tad ha ne veritent nemet dismegans. Tud diskiant ma zamp, ho buez a guemeremp evit eur follentez; mezuz e cavemp ho maro; ha setu penauz int savet da reng bugale Doue, hag ho lod a zo eniver ar zant.

Ni a zo bet dianket divar hent ar virionez; sclerijen ar justis n'e deus ket paret oc'h hon daoulagad; heol ar skiant ne deo ket bet savet devidomp. En em skuizet omp en hent an drong, en hent a gas da goll, baleet on eus dre hentchou tenn, ha n'on ens ket anavezet hent an Aotrou Doue.

Da betra eo talvezet deomp hon orgouil? Da betra eo talvezet deomp hor fougue gant hon danvez? An traouze a so eat ebien evel eur skeud, evel eur c'hannad o redek. Tremenet int evel eul lestr a dreuz ar c'houagou o lamet; eur vech ma zeo eat ebien ne onzeur mui dre beleac'h eo tremenet, n'en deus lezet roud ebet var an dour; pe evel eul labousa dreuz an ear var nij, ha ne aller ket gouzout dre he hent eo tremenet; clevet a rer epken trouz he ziousket o skei an ear hag oc'h he faouti gant poan; hoguen eur vech ma zeo nijet ebien, ne jom roud ebet var he lerc'h; pe evel eur zaezen tennet etrezeg ar pal; an ear troc'het ganthi a ia kerkent d'he blas, ha den ne voar dre beleac'h eo tremenet. Evelse a veac'h oamp ganet ma zomp eat da petra; n'on ens diskuzet tam ners na tam vertuz, hag omp eat da goll dre hor fallagriez.

Setu aze petra lavaro ar bec'herien enfern. Rag esperans an dud difeiz a zo henvel oc'h bruzun-colo, oc'h an eonen scanv a zao divar an dour, oc'h ar mognet pere a ia oll gant an avel. Henvel int ive oc'h ar zomp a zal-

c'her euz eun tremeniat ha ne jom nemet eur pennad der vez en eul leac'h.

An dud just avad a vevo ato; Doue a zalc'h prest eur c'hobr pe eur recompans evitho; an oll-c'halloudeg en devezo sonch anezho. Euz a zomp Doue e recevint eur rouantelez dudiu hag eur c'harlantez-caer ha skedus. Rag he zorn deou ho gololoio, hag he vrec'h herzuz ha santel ho difenno.

Levr ar farpez V. I. G. M.

Kimad an Aotrou Mintier
Guec'hall eskop e Landreguer
D'an Aotrou La March eskop Kastel
Ho daou maro en eur vro bell!

VAR DON'AR GANANEEN;

P'eur, va Doue, vezo dilivret
Va ene euz ar chadennou?...

An Aotrou Le Mintier a gomz :

Chui, va mignon, ia da Vreiz-Izel,
Evid-hon pebez kalounad!
Pa deuit breman d'am dilezel
Me vezo va unan dalc'hmad!
Evid-hoc'h-hu e vezo pedet
Pa viot erru en hor bro!
Mes me, sionas, a vo disonjet!!
Kenavo, eta, kenavo!!!

Ho relegou a vezo renket
Etouez relegou ho kerent,
Va re me a chomn aman kuzet,
Bouzaret holl gant trouz an hent;
Plijet gant Doue ma vint kasset
Eun deiz var lerc'h ho re d'hor bro!
Allas! Biken n'am ho va reket!!
Kenavo, eta, Kenavo!!!

En eur memes bro e oamp ganet
A savet en eur renk huel,
Gand eur memes goalen drouk-skoët,
Tolet hon daou en eur vro bell;
Hon daou hon daelou hon doa mesket
En eur bedi evit hor bro!
Gand ar maro ez oamp unanet!!
Kenavo, eta, Kenavo!!!

En kalonou eskibien breiziz
Eo hirvidic ar garante,
Ag e klaskopt, en dro d'ho iliz,
Bodenni ho holl bugale;
Bras meurbed e vo an diguemer
A vezo gret dec'h en hor bro!
Mes me na vin mui en ho kever!!
Kenavo, eta, Kenavo!!!

Guechall pa guitajomp Breiz-Izel
Ez oamp mantret gand ar glac'har!
Breman ho toare zo dishevel
Ho heur-vad a zo heb he far!

Dindan goard eur belek kaloniek
Evel holl beleien hor broik
G'hoarvto hep skei er garnek
Kenavo, eta, kenavo!!!

Mil honnoz d'ar gouezaker brudet
Dre an muzen, dre an skouer vad,
Ho nag a zaletre doas skullet
Pa serras do'ho daoulagad!
Rebez joa e vezo evit-hu
Breman pa zistroet d'hor bro!
Me hepken a vo ec'hirvoudi!!
Kenavo, eta, kenavo!!!

Va Doue, pardonit va c'hlemou
Bras meurbed ez eo va anken,
Chui hepken a sec'ho va daelou,
Mar plij sellaoit va fedou,
Me a garfe heullia va mignon,
Me a garfe guelel va bro!!
Va Doue grit ervez ho kalon
Eur vech e hoas eta, kenavo!!!

An Aotrou De La March a gomz breman
VAR EUR MEMES TON.
Kuz, va mignon, eo an dispart
Evid an eil hag egile!
Hem e halon oc'ho ar goull,
Chui deuiodier nenta parve,
Rag me a guedale ho da bedi
Ken a erufot en hor bro!
Ene biken na lavaromp ni
Ar gir ker kalet: Kenavo!!!

KBLBDBR.
Beleien conferans Kemper o deus savet, er conferans
diveza, cant tregont lur da gas d'hor Tad Santel ar Pap
enhe izom brema.

Ar memes beleien, er conferans diaraog, o doa savet
pemp cant triugent lur evit delc'her eur zouav, e ser-
vich ar Pap.
Parrez Plouescat e deus digasset d'an eskop mil
neg lur ha triugent ha deg guening evit kenderc'hel
daou zouav e servich hon Tad Santel ar Pap.
Beleien canton Daoulaz o denz ive roet mil lur evit
daou zouav e servich ar Pap.

Euz a Varsell e scrifer ez euz euz er goull
cant antercant zouav nevez da rom evit servich ar Pap.
E ti an Aotrou Kerangal, moullan ar garet, o deus
digor eul listen evit ar re o defebolante vad da roe
dra bennag evit lacat ha kenderc'hel soudardet e servich
an Tad Santel. An ti-ze zo e Kemper, ru ar Gouguere
N^o 18. Ar re a gasfe ho ofrans, ia neze merket var an
zetten ho hano, hag ar pez o devezo roet
Kenta listrien
An Aotrou De Chabre, 25 ligoret, 26 st. 100
An Aotrou De Kerangal, 100 st. 100

E Sant Eutrop eur plac'h iaouang oajet e bemp bloas varougnet a voue taguet gant ar c'holera brema ez eus teir sizun bennag. He c'hridi a rejor maro. Sebeliet e voue, ha goudeze casset d'an douar. Pa' voa diskennet er bez, an hini a iea d'he golo, a glevaz eun trous bennag en' arched, hag a redas d'ar presbital. Medesin Pflouigneau a voue kerc'het dioc'hitu, hag hema' a zisclerias ne voa ket c'hoas maro tre, mes e voa ar vuez o vont kuit. Ar c'horf so bet casset neuze da dremen an noz en iliz, o c'hortoz beza enterret antronoz evit an eil guech.

Evit doare an Exposition ne echuo ket gant miz here. Chom a rai digor beteg ar seiteg a vis du. En eis dervez diveza ne vezo kemeret netra digant ar re a ielo da zellet.

Eur vag pesketa euz a Odiern e deus great pense var reier Penmarc'h. Daou euz an dud a ioa varnezh' so bet beuzet.

E Sant Brieuc an assemble evit ar brezonec so bet digoret gant calz a zolanite. Eno e tleer comz a gals traou talvoudeg evit Breiz. Evit doare an assemble-ze a bado hirroc'h evit na zonet.

An ed a guera ato, ervez *Cazeten ar Meziou*. Gouscoude ar Fransha Brozaos zo comanset da lacat digas ed euz an Americ. Euz a New-York ez eus dent daou vil sac'had ed d'an Havr-nevez.

Ar re zo hoas da vaga ho c'hezeg gant kerc'h, o velet pe guen nebeut a guerc'h so bet er bloa-ma ha pe guer ker eo, o velet ez eus bet er c'hontrol eur bloavez mad a vinis du, a c'houlou ha ne allet ket rei ed du d'ar c'hezeg eleac'h kerc'h. — Cridi a ran, eme *Cazeten ar Meziou*, ec'h elfet rei dezho kerc'h hag ed du mesc e mesc, o lacat da nebeuta eun drederen kerc'h etouez diou drederen ed du. Ar re gouscoude a rafe an essa-ze a ve mad dezho lacat evez, rag ar boetach-ze zo c'hoas nebeut anavezet.

En aradeg vras zo bet e Billancourt, e kichen Pariz, epad an Exposition, ez oa antercant alar o vont en dro. An eler-ze ne ket euz a Bariz e voant calz anezho, an eler-ze a ioa bet casset di euz a bep corn a Frans. Bez'e voa unan, deut euz a stal an Aotrou Garnier, euz a Redon. An alar-ze a jome en eur c'horn tro, ne voa den da vont gantha. Eun den iaouanc, eul labourer douar, eur breton euz a Bloalay, e Costez-an-Nord, en em gaf da dremen, hag o velet an-alar-ze oc'h eana, a guinnig mont gantha. Ar perc'hen ne c'houloune ket guell. Setu eta ar breizad iaouanc-ma oc'h en em lacat en alar, hag o comans da drei douar. Ker mad labour a reas, ma lakeaz an oll zellerien d'he veuli ha ma c'hounezaz unan euz ar prizioù. Goudeze pa gomzet d'al labourer breton euz an taol caer en doa great, e lavare ken difougue ha tra : guella ma c'hellen am eus great, mes n'em oa sonch ebet da c'hounit prizioù ! Ian Briens a rer euz al labourer douar-ze. Kementse gouscoude zo eun henor evit labourerien douar Breiz.

En tu-all da Vrozaoz, tost da aotrou ar Seos, ez eus evezhi harvet Hebrid, hag a zo enho guizioù divalo, avalc'h, ervez eur gazetenn harvet *L'International*.

En evez-ze ar merc'hed eo a ra al labourer poanuis-sa. Labourat a reont an douar, palat, pignellat, douguen var ho chonc sammou-teil, rag evit doare eno n'ens ne-meur na lan na kezeg. Mont a reont d'ar guennoù da denna moudet, ha neuze gant boutigui braz e tougont ar moudet-ze d'ho zi var ho fenn pe oc'h ho c'hein.

Mar tigouez deoc'h avechou guelet ar c'hreg hag an ozac'h o vont ho daou en hent, bezit sur eo ar c'hreg a zougo ar zamm. An ozac'h didalvez ne rai nemet sach a var he gorn butun. Mar tigouez eur ster da dreuzi hag a ve eun tamig doun, ar vaouez a dreuzo da guenta gant he zamm. Pa vezo eat en tu all d'an douar e lacai he bouteg var an douar, hag e teuo en dro evit trefizia he Aotrou oc'h he c'hein.

Pa vez gouliou ar bouteg e veler zoken avechou ar c'hreg o touguen ozac'h ha bouteg oc'h he chonc !

Evelse ar merc'hed a ra eno micher al loenet samm e leac'h all. Guelet ez euz eun den iaouanc coz a zontje d'an oll ne zemesje morse, o kemeret eur vaouez pa zonet nebeuta. Unan bennag o veza goulenet outhan petra oa dezhan beza eat da zimizi deut d'an oad ma-zoa.

— Ah ! emezhan, ne ouzoc'h ket ; va loen a zo maro, hag oa red din caout unan bennag da ober va labour !

Cridi a rafet ama clevet comz a dud gouez, hag e guirionez pa vanc ar guir feiz, ar feiz catolig, e c'heller en em rei da c'hizioù, bozamanchoù ha ne dint nemeur guelloc'h evit ar re a gaver er broioù gouez.

Eun doare nevez da zavetei ar vuez. En dez-all, var bord ar ster Danub, eun den iaouanc skuiz evit doare gant trubuilhou ar vuez-ma, hag he benn, eredabl, distresset cals pe nebeut, a iea d'en em veuzi. Mont a rea etrezeg ar ster evel eun den diskiant, ha pa voa digouezet tost, e taol kuit he dog hag eur vaz a ioa gantha en he zorn. En tu all d'ar ster, dirazhan, e voa dres d'ar mare-ze eur chasseur azezet var al leton oc'h ober he can hag o sach a var he gorn. Pa Velaz an den-ma o tostast evel ma reas, e santaz ervad ez ea d'ei em deleur en dour, hag hen cregui en he fuzil, hag en em lacat da grial : na dostast ket oc'h ar ster, pe me deno varnoc'h.

An den iaouanc, o clevet kementse, a zavaz he benn, ha pa velaz ar chasseur, e redas buhan da glasc he dog hag he vaz, hag hen kuit ac'hano mar gouie. An den-ze en doa c'hoant da echui he vuez dre an dour, mes ne ket dre eun tenn. Abaoue, a leverer, n'en deus bet c'hoant ebet d'en em zistruja.

PREZ AN ERP.

KEMPER. — 19 Here.		PONT-NABAT. — 17 Here.	
Priz ar c'hant lur.		Priz ar c'hant lur.	
Guinis....	46 lur, 75 c.	Guinis....	48 lur, 33 c.
Segal....	43 lur, 38 c.	Segal....	43 lur, 33 c.
Eiz.....	9 lur, 89 c.	Eiz.....	11 lur, 50 c.
Ed-du....	8 lur, 01 c.	Ed-du....	9 lur, 79 c.
Kerc'h....	9 lur, 57 c.	Kerc'h....	11 lur, 23 c.
Avalou-douar	4 lur, 75 c.	Avalou-douar	4 lur, 50 c.

Ar Gerant: AR. DE KERANGAL.
Kemper, moulet gant AR. DE KERANGAL, Moulet an Escopti.

FEIZ HA BREIZ.

KELOU A BEP BRO, HA KENTELIOU VAR BEP TRA.

DIGASSET BEP-SUL

Da guement Christen a goms ar brezonec.

Eun Abonnament d'ar Gazeten a goust :

Evit eur bloas.....	DAOU SCOUET.
Evit c'huic'h miz.....	EUR SCOUET.
Evit tri miz.....	C'HUEC'H REAL.
EUR gazetenn ebken.....	DAOU VENNEC.

Ar baemant a dle beza great araog caout ar gazetenn.

ALIOU

Ar scrijou a ve c'hoant da lacat er gazetenn a dleer da adressi oll d'an Aotrou MOUAV, Beleg-Kemper.

Ar paemanchou a dleer da adressi d'an Aotrou SALAUN, ebken. An abonament a guemerer e ti an Aotrou SALAUN, librer, ru Kereon, e Kemper.

KEMPER, 2 Du 1867.

Setu eta ar mizioù du, an discar amzer o ren, ar goan o tont gant he amzer tenval, gant he goumoul teo ha du, gant he c'hiloeier, gant he varrou avel, o c'hortoz digas ere'h ha scorn. An deliou a veler o velen, o sec ha hag o coeza d'an douar. Pa vez sioul an amzer, e veler an deliou-ze o tistaga dioc'h ar scour, hag eleac'h coeza plom d'an traou, e chomont da droidellat en ear en eur zisken. Lavaret e ve o defe keus d'ar branc-ma voant stag outhan, o defe diegui pe herez, o tostast oc'h an douar eleac'h ma tleont breina. Ar iet glaz ha kement so er pakeier a veler ive o voenvi ; ar bleunioù ha kement a elle ober plijadur d'an daoulagad, a veler o coll ho guenet, o stouet ho fenn hag o plega etrezeg an douar evel evit clasc ar bez. An douar skuiz o touguen eur bloaveziat fronez, a ia da eana evit kemeret eur vertuz hag eun pers nevez evit douguen fronez adarre pa dem ar mare.

Kementse zo eur skeaden euz a vuez an den pa dosta ar gosni, pa deu ar gosni da dostast gant he zrubuilhou, gant he c'hiloeioù, gant an oll bozamanchoù zo oc'h he heul. An den ive a deu da groumma, he benn a deu da zoubla etrezeg an douar evel evit clasc al leac'h ma tle eana goude ar vuez-ma o c'hortoz ar vuez a bado ato. Euz a guement a velomp o tizec ha hag o tistruja gant an discar amzer, netra ne da da goll. An delien seac'h a guez euz ar vezen a deu da drei e douar mad, hag a zervich da drempe evit lacat plant all da zevel ; servichout a ell zoken da rei mui a nerz hag a vuez d'ar vezen e deuz he douguet. Ar c'heoten dister o vreina a zicour gueot nevez da zevel. Evelse nicun euz an traou crouet gant Doue ne da da netra. Ne reont nemet chench doare.

Corf an den ken nebeut ne da ket da netra. Goude beza bet lakeat en douar, fia deut da veza ludi er bez, e tle en em-nevezi ha sevel ac'hano ; ha mar deo bet implijet er vuez-ma e servich Doue, e savo ac'hano mil guech caeroc'h evit na voa araog an diskuis-ze en deus great e calon an douar.

Mar deo trist an discar amzer, mar taol an amzerioù divalo trisdidiguez hag anken er spereioù, ar bez a gonsol eo ne dle ar goan padout nemet eur pennad, hag ez eo red d'ar douar euz a fronez eun gallout adarre d'an nevez amzer, eun amzer nevez, eun amzer nevez, a bleunioù hag a fronez. Evelse, var ma dle, tris ha doanuz evit an den guelet an terminoù, ha d'ar douar, gant he nerz o simplaat, he tle rei o tont da veza diassur, he izit nebeuta a vuez an den, he skiantoù diegussoc'h, er eur guer, ar maro o rei pa anaout e tosta, ar bez a gonsol da viall eur c'hristen, eun gouzout he deo ar maro nemet eun tenn, he tle rei he vuez nemet eun pennad, hag ez eo red d'ar douar euz a fronez eun gallout adarre, da e hiasvezi ha da vuez eun den pa dosta.

Hon Tad Santel ar Papp, e creiz an trubuilhoù zo en dro dezhan, a zo ken dizaonn, he fizians e Donnezho ker bras, ma laca souezet an oll ha ma ro ive pers calon da guement hini a dosta outhan. Lavaret a rea en dez-all da eun Aotrou a Rom a ziskueze caout aoun : « No pet ket aoun, va map, abaoe Attila an Iliz e deus guelet ken aliez a argaden (invasion) o vont e moguet. Hag e tiskueze gant he zorn oc'h moguer ar zal eun daolen eleac'h ma veler Sant Leon ar braz oc'h ober da Attila mont var he guiz.

N'ens ket pell eur re bennag a lavare d'ar Papp e voant souezet oc'h he velet ken dizaonn ha ken dizec'h. « Petra fell deoc'h, eme an Tad Santel, santou a ran diabars enhon eun dra bennag, hag an laca da veza di-nec'h ha da gaout ar benneg-ma. Ne allan ket rei deoc'h da anaout ar zant-ma-ze, mes he zantou a ran.

Anjer. — En Escopti Anjer ez eus consaeret er sizun dremenet eun iliz, hag a zigas da zont euz a eun den hag a zo he hano e ginnou an oll gristemen, er mare-ma muioc'h evit biseoas. An den-ze eo ar Jeneral Lamo-ricier. An iliz nevez ma comzomp anezhi zo bet savet dre he zoursi ha gant he zavez evit eul loden vad.

E Frans, evel on eus lavaret, ez euz eis milion pouezellad ed nebeutoc'h evit a laker bep bloas da ober bara. Er broiou all, calz anezho, e tigouez ar memes tra. E Brozaoz e vanc pemp milion varnuguent pouezellad ed; e Beljic hag en Holland, 3 pe 4 milion; e Sued, eur milion; e tu an anternoz d'ar Russi ez eus dienez; e Finland ez euz naoueguez. Bez'ez euz, ep mar, carteriou hag o deus da zioueret; n'eus ket gouscoude avoalc'h er broiou-ma hag ez eo red caout sicour digant an Americ. Euruz eo eta ar vro-ma dre ma roio an ed du bevans d'an dud eleac'h ma zeo ber an danvez bara.

Ar memes cazeten a lavar: E Frans, ez euz etre deg ha triuguent ha pemzeg ha triuguent mil den hag a bae port-d'armes, da lavaret eo, otre da chasseal. Etouez ar vanden-ze ec'h eller lacat ez eus, var zeg, eur chasseur mad, daou jasseour e nestamant, ha seiz chasseur hag a zo eur burzud ho guelet o'paca eur preiz be-mag. Ar re-ma gouscoude a ra avechou calz trouz, a zeo calz poultr; hoguen evit ho guelet o vont a brez gant ho armou, ar c'hefeleg a ell chom dinec'h ha dibreder da ober he gorniat butun, ar c'blujar d'en em zouara, ar c'houniel da scrabat he fri hag ar c'had da ober he baro.

Gazeten ar c'hreisdeiz a lavar ez eus digouezet e Marseille ed a verniou. Digouezet ez euz a vrema tri milion, pevar c'hant daou varnuguent mil, daou c'hant c'huac'h varnuguent pouezellad. (Quintaux.) Ar pez a dle lacat eun nebeut discar var an ed.

Hag e guirionez, e Pariz ez eus discar var ar bleut. Mes eno eo dre eun taol finessa euz ar yarv hadourien vras pere en em gleo evit lacat discar evelse er marc'had, pa vez sonjet gantho.

E Ponthivy ez eus bet eun tamig dispac'h abalamour da yarv hadourien a brene ed da gas ac'hano.

Lavaret a rer deomp ez eus brema adarre o vale dre an escopi tud, credabl aberz ar protestantet, o kinniguen levriou brezonec, canaouennou ha levriou-all, hag a roont exit netra. Var guementse e roimp adarre an ali on eus roet c'hoaz onspen eur vech d'ar re ma kinniguer dezho al levriou brezonec-ze: Na brenit ha na guemerit morse levr brezonec ebet, na canaouennou, na canticou na traou-all, nemet caout a rafac'h e penn al levriou-ze an otre pe an approbation roet gant an Aotrou'n Escop pe gant unan euz he vikelet vras.

Etouez an traou caer so bet lavaret e Sant-Briec en assemble-vrezonec zo bet eno, eus het hano euz ar vein-hi, euz an daoliou-mein, crom-lec'hiou, hag euz a draou all evelse a gaver stange Breiz-Izel. Unan euz an aotronez a voa eno, den goueziec da lenn en astrou, a lavaraz evelen: Gouzout a rer pegueit amzer a laca ar sclerijen da zont euz eur stereden beteg an douar. Gouzout a rer ez eus stered keit diouzomp, ma laca ho sclerijen da nebeuta tri mil bloas da zont beteg enhomp; ha

sclerijen an douar a dle lacat ive, ep mar, keit all da vont beteg ar stered-ze. Lakomp eta eur stereden hag a laca ar sclerijen anezhi tri mil bloas da zont bete'n douar; neuze e tleomp guelet ar stereden-ze evel ma edo brema zo tri mil bloaz; evel ive euz ar stereden-ze e tleer guelet an douar evel ma edo tri mil bloas zo. Ma c'helfemp eta mont d'ar stereden-ze en eun taol lagad, ker huan hag eur zonch, e velfemp petra rea hon tadou coz ama brema ez eus tri mil bloaz, hag ec'h allfemp gouzout ive, ep mar, penauz, perag hag evit petra eo bet savet ar vein burzuduz-ze a velomp dre Vreiz-Izel. — Kementse so guir; mes ar vech?

Eur paour kez den a ioa en dez all dirag al lez-varn. Eul laeroni a damallet dezhan, mes hen a nac'he ato crenn. Gouscoude an testou a lavare o doa he velet.

— Penauz, eme ar barner, e c'hellit-hu nac'h, ha beza aze c'huac'h test hag o deuz ho kuelec'oc'h ober ho taol?

— C'huac'h test, Aotrou barner? Me a gavo deoc'h antercant ha n'o deus ket va guelet! G. M.

HENT HOUARN.

Da be heur e tiblas hag e tigouez ar c'hirri tan.

O VONT A CASTELLIN VARZU NAONET.

	kenta train	eil train	trede train	1 ^e cl. e paer	2 ^e cl. e paer	3 ^e cl. e paer
Castellin...	6 h. 10	10 h. m.	4 20	» l. »	» l. »	» l. »
Kemper...	7 10	10 55	5 19	3 45	2 60	1 90
Kemperle...	8 33	12 13	6 43	8 50	6 40	4 70
Lorient...	9 9	1 2	7 24	10 75	8 05	5 90
Redon...	» »	» »	» »	22 85	17 15	12 55
Savené...	» »	5 30	» »	27 55	20 65	15 15
Naonet...	» »	6 51	» »	31 90	23 95	17 55

O TONT EUS AN NAONET VARZU CASTELLIN.

	kenta train	eil train	trede train
Naonet...	» »	6 h. 10m.	» »
Savené...	» »	7 30	» »
Redon...	» »	8 29	» »
Lorient...	7 h. 49m.	11 50m.	5 47 n.
Kemperle...	8 32	12 49	6 42
Kemper...	9 39	1 59	8 2
Castellin...	10 47	3 »	9 13

PRIZ AN ED.

	Priz ar c'hant tur.	Priz ar c'hant tur.	
Guinis....	46 lur, 75 c.	Guinis.... 47 lur, 50 c.	
Segal....	43 lur, 38 c.	Segal.... 42 lur, 70 c.	
Eiz.....	9 lur, 89 c.	Eiz..... 11 lur, 50 c.	
Ed-du....	8 lur, 04 c.	Ed-du.... 9 lur, 38 c.	
Kerc'h....	9 lur, 57 c.	Kerc'h.... 11 lur, 43 c.	
Avalou-douar	4 lur, 73 c.	Avalou-douar	4 lur, 63 c.

Ar Gerant: AR. DE KERANGAL.

Kemper, moulet gand AR. DE KERANGAL, Mouler an Escopi.

FEIZ HA BREIZ,

KELOU A BEP BRO, HA KENTELIOU VAR BEP TRA,

DIGASSEB BEP SUL

Da guement Christen a goms ar Brezonec.

Eun Abonnant d'ar Gazeten a goust:

- Evit eur bloas..... DAOU SCOÛET.
- Evit c'huac'h miz..... EUR SCOÛET.
- Evit tri miz..... C'HUAC'H REAL.
- Eur gazeten ebken..... DAOU VERNEC.

Ar bacamant a dle beza great araog caout ar gazeten.

KEMPER, 9 Du 1867.

Petra lavarfac'h-hu euz eur scrifagner hag a stlapfe oc'h ho kinou eun daltezen evel houma: an Aotrou B... somaro tri dervez zo; eun den honest e voa, den goueziec, den a skiant. Servicha a rea Doue ervez he c'hiz: morse avad ne falle dezhan mont vardro beleg na var dro iliz. Dalc'het en deus mad d'he greden beteg an huanad di-veza, ha ne ket falvezet dezhan receo Sacramant ebet. He-vignonet o deus eur c'heuz-bras-dezhan. He gort o deus casset eun euz he di d'ar veret, ep beleg, na croaz, na goulou, na dour benniguet. Rag-se-ta discaromp ar Pap.

Petra? Discar ar Pap abalamour ma zeo falvezet d'an Aotrou B... beva evel ar loened-ze a glever o c'hrognal en he graou, abalamour ma zeo falvezet dezhan mervel evel eur c'hi ha beza laket en douar, evel eun azen maro gant al lorgnez? Ar scrifagner-ze, ep mar, en deus collet he benn; red eo beza diskiant evit comz evelse.

Gortozit, lenner, na vuanetait ket re; kemerit hoc'h amzer, hag evessait mad. Guelet a reot ne ket ken diot ar scrifagner-ze evel ma sonthfe deoc'h. Guelet a rafac'h zoken-seulvui a guem a zo etre daou bennag corden, seulvui a ijin a ranker da gaout evit o c'houlma. Hoguen setu-ama petra fell dezhan da lavaret: kemerit skuier dioc'h an Aotrou B... bevit ep Doue na relijion, evel eul loen; goulennit ma vezo laket ho corf e corn eur pare pe e corn eul liors, ep beleg, na lit, na peden, hag evelse ne vezo mui izom nag a veleg, nag a relijion, nag a iliz, nag a Sap. Ahan! Ne ket selear ha freaz an dra-ze? Oh! ma comse ato ker freaz-ze ar scrifagnerien difeiz ha dizoue, ne rafent ket kement a zroug evel a reont. Rag, a drugare Doue, nebeut zo c'hoaz a dud, badiziant var ho fenn, hag a garfe beza laket e reng ar penn kezeg a stagont oc'h ho c'har, e reng al loenet a vagont hag a lardont en ho c'hreier, e reng ar chas da bere e roont eun tam bara evit harzal.

Hoguen an oll scrifagnerien difeiz ne gomzont ket

ALIOU.

Ar scrijou a ve c'hoant da lacat er gazeten a dleer, da adressi oll d'an Aotrou MORGAN, Beleg e Kemper. Ar paeamanchou a dleer da adressi d'an Aotrou SALAUN, ebken. An abonnant a guemerer e dle an Aotrou SALAUN, librer, ru Kereon, e Kemper.

ker freaz-ze. Caout a reont an tu da ober an brezel d'ar relijion ha d'an iliz, e euz didrouz hag goustad. Rei a raint deoc'h zoken avechou alioù euz ar re vella. Lavaret a raint deoc'h beza honest, dreist oll dioual da gregui er pez a zo dezho. Evit aloubi ar pez zo d'an iliz ha d'ar Pap, ne gavont ket erve drong kementse, mes ar pez so dezho ho unan, alabañ eo tont kementse a ve eun tortet bras.

Hoc'h alla a raint zoken marteze da ren eur vuez christen, da heulia gorc'hemenn Doue hag an iliz, da renta servich d'ho nessa, da veza mad ha carantezuz e kenver ar oll. Ha perag e roont ar alioù ker fur d'ar re all hi pebe ne roont lous hag a zeo nag euz he lezen, hag euz an iliz hag euz he goue remanidou? Perag a abalamour ma c'houzont ervad ket ha ma vezo eun dro dezho nemet tud hag a ren eur vuez christen tud hag a vir lezen Doue hag hui an iliz, int sur e chomo hozra gant ho, ec'h allint marteze zoken aloubi calz pe nebeut euz a dra ar re all, rag ar quella christenien, eo ato ive ar re essa caout aler outho, eo ato ar re ziveza oc'h en em glem euz ar gaou great outho, eo ato ar re zo mui da nizout enho. Evelse eo evit ho mad hag ho guint ho unan eo e ho ar seulvui-ze alioù mad d'ar re all. Hoguen en euz ket ho alioù mad, mui cavont tro da gomz a enep ar feiz, done lacat da vougañ perda zamplaate calonou ar re ho lenn, ne vankit eun den ober, hag ho scrijio so ato seulvui da fessoc'h ma zeo muioc'h euzet ar c'hontam a zo enho.

Petra a onfet da veleg eun den an douar eguet feiz an dud-ze a iara breza d'ar iliz ha d'ar Santel ar Pap, da zifen iliz Jesus-Christ. Ne raint euz ar re relijion eo a raint evelse da zifen ar traou da lacañ ho buez var var abalamour da zifen ar feiz, euz a raint d'an den, a ro dezhan re un menz hag euz a raint da ne oufe ket da gaout anezhan he unan, ha laca eun dornadig zouaved d'en em zifen oc'h bandennou braz a zeo pac'he-rien. Ha ne ket ephen d'en em zifen outho, mes zoken

D'ho zrec'hi. Cre eo an hini en em harp var breac'h an Aotrou Doue hag a vrezela evit an Env.

Evelse en eul lizer scrifet euz a Rom d'ar gazeten l'Univers, an hini her scrife a lavare :

Eur zouav hanvet Joseph Benezet, euz a Doulouz, a zo deut bremaic d'am zi : — Dont a ran, emezhan, da lavaret kenavezo deoc'h. Va c'hompagnunez a ia d'ar vrezel, hag ez an d'he heul.

— Mes, va mignon, guelelet em euz ho tad n'eus ket pell, hag e vouele d'ho preuc a zo maro ama gant ar c'holera. Calon ho mam zo mantret ; caout a ra dezhi ez eo avoalc'h dezhi beza roet eur map evit servic'h an Tad Santel. Carguet oun da c'houlen otre d'eoc'h da vont d'ar guet.

Joseph Benezet o clevet kementse, a jenche drem. Dous ha didrouz peurliessa evel eur plac'hig iaouanc, e sao neuze huel he bonn an tan a zeu euz he zaoulagad.

— Hag an honor ! emezhan, hag an Env ! Mont a ran dioc'htu en hent. Kenavezo ! Petra ! e false deoc'h ez afen da di va zud brema pa zeuz izom ac'hanon ? An dra-ze a ve beza digalon. Ar zouavet ne deont morse adren ; morse ne vezont great prizonierien. Mervel pe drec'hi a reont.

Ne ket souez guelelet tud hag a zonch evelse en Env oc'h ober burzudou.

Caeroc'h evit evelse a veler gant an dud-ze leun a feiz o vont da dachen ar vrezel. Izom zo da zonzal en ene han'eus nemeur a amzer. Petra reont ? ho beleien a ia d'ho heul, hag e cofesseont en eur vont. Unan a jom scoaz oc'h scoas gant ar beleg, hag a ra he confession ; pa vez echu gant ha, en em bella, hag eun all a dosta d'he dro. Hag ar beleg, p'en deus evelse cofesseat eun toullad a red da gaout eun toullad all da ober ar memes tra.

Mes ive mar deo plijadur comz euz an dud a feiz, eo eur scrij comz euz an dud difeiz. Penaus lavaret guer divarbenn an dispac'herien a ra ar brezel d'ar Pap ? Penaus coms dreist oll euz an torfejou heuzuz a gometont en ilizou ? Bez'ez eus traou hag a renker serra ar guinou hag an daoulagad pa ho gueler pe pa ho c'hlever ; ne oufet nemet gouela hag hirvoudi.

Gouscoude etouez an dispac'herien-ze an oll ne dint ket tud difeiz. Bez'ez eus lod hag a zo great dezho dre gontagn en em lacat e reng ar re a c'halver rochedou-ruz. Pa vezont gouliet, tizet gant eur voulet bennag, eo az avoalc'h anaout an eil num dioc'h eguile. Ar rochedou-ruz a varf evel chas, al leoudouet en ho guinou ; ar re all a c'houlen eur beleg da rei dezho ho zacramanchou. En eun hospital eo bet guelelet an dra-ma :

Eur paour kez dispac'her a ioa eno mac'haniet, tost ar maro dezhan. Goude beza lavaret diaraog ne felle ket dezhan caout he zacramanchou, e teuas keuz dezhan, hag e c'houlennaz eur beleg. Oc'h he glevet, eur rochedou-ruz a ioa en he guichen, a leze e connar. En em lacat a reas da lavaret dezhan a bep seurt traou, n'oa nemet eun diot, eun digalon, eur guinaouec..., ar paour kez den a respontas :

— Roit peoc'h din, avoalc'h omp bet tromplet ganneoc'h ! Ma c'halver oc'het, ar gounn a vije bet evidoc'h, ha ni guinaouecien a vije chomet ato paour evel diagent. Eat oun d'ho c'houlenn aballmour-ma c'houardrouzet va laza ma na dajm ket, mes hirio pa'z an da vervel, pa z an da goza etre daouarn Doue, ne fell ket din beza reuzendig epad an eternite. Me a gred ez euz eur vuez all, em euz eun ebe ha ne varvo ket. Me fell din mervel evel ma zeo maro va zad ha va mam, da lavaret eo, e guir gatolik. — Cofez a reas goudeze gant calz a zaelou, ha prest goude e varvas.

Eur glanvourez pareet e kichen bez santez Radegond, patronnez ar Poetou. Tad ar glanvourez eo a scrihe unan ar pez a ioa digouezet gant he verc'h. N'em eus ket izom da lavaret ne zisclerier ket ama ez euz eno eur guir vurzud, eur guir viracl ; an iliz epken a ell barn kementse. Merca a rer epken an traou evel ma zint digouezet.

Credet em euz, eme tad ar glanvourez, e voa dlet din rei da anaout d'an oll, muia ma c'haljen, ar c'bras en deus roet Doue d'am merc'h, evit he drugarecat hag evit ma vezo rentet gloar d'he hano. An naonteg a viz even, er bloas tremenet, eo e tigouezas kement ma,

Ar plac'h-ze a gozas clan, e mis guengolo, 1851, gant eur c'hlenvet languis. Ne devoa neuze nemet trivac'h vloas. Poaniet braz oa, hag he foan a iezaz ato var gresc bete mis mae. Abaoue oa chomet evelse ep gallout caout pare ebet, ep gallout dere'bel tam bouet, ep gallout sevel couls lavaret morse. Ouspen he c'hlenvet languis, e teue dalc'h mad eur c'hlenvet bennag all da greski he foan. Ar vedesinet a ioa nec'het ganthi ; coll a reant ho foan, ha souezet e voant oll o velet e c'halle chom beo gant kement a glenvejou evel a stourme outhi hag hi ken diners ha ma zoa.

Eur vignonez dezhi, o chom var ar meaz, a c'hoanteaz he c'haout en he zi, o sonjal e vellaje dezhi o caout eno guelloc'h car. Kementse a reaz eur blijadur vras d'ar glanvourez, ha fallout a reas dezhi mont peguen diners bennag ma voa. Great e voue dezhi eur guele en eur c'harroz. Hoguen caer a voue he c'has soupla ma c'hellet, ar veach-ze a voa re evilhi, ha digouezet eno e chomas pevar mis toc'hor, etre ar maro hag ar vuez. Kerkent ha ma voue eun tamig guellaen enhi, e voue digasset en dro d'arguer. Goude ar veach-ze e chomas c'hoas tri bloaz evelse. Eun dervez e lavaras d'he zad e devoa c'hoant da veza casset da vez santez Radegond, hag e voa ar zonzeh-ze en he speret abaoue pell amzer, evit goulen ar pare ne alle ket ar vedesinet da rei dezhi. He zad ne felle ket dezhan rei dezhi he goulen, rag sonch en doa pegument e voa bet toc'horeat oc'h ober ar veach e doa great tri bloas diaraog. Gouscoude evel ma tale'he da c'houlenn mont di, ha ma voa he mam a unan ganthi, an tad a roaz he otre, hag en em lakejont en hent an trivac'h a viz even. An naonteg, da c'huic'h heur dioc'h ar mintin, e voue douguet d'an iliz, hag e voue communiect araog an oferen, rag cridi a reat ne alje ket chom da glevet an oferen hed da hed. Gouscoude e c'hellas chom, hag e

pede caloneg epad an oferen, ha bepen amzer e scrijfe. He zad hag he mam a voa unan a hep tu dezhi ha ne dehnent ket ho daoulagad divarvezhi.

Pa voa echu an oferen santel, he zad he c'hemeraz etre he zivrec'h hag he diskennas da gaout bez ar zantez. N'oa ket diaz he douguen, scan avoalc'h oa, rag n'oa anezhi nemet ar relegou, he izili a ioa sclasset, hag eur c'hnezen deo a ioa var he zal. An tad en doa eun aoun bras na varfche etre he zivrec'h. Goude beza great an dro d'ar bez, ar glanvourez a reas sin d'he zad da jom a za. Neuze e reaz eur scrijaden pe ziou ; ha prest e crias : Pare oun ! Pare oun ! Siouet a ra var ar mean bez, ha goude e sao ac'hano he unan dre ar scallier en deus trivac'h delez ep harpa e nep leac'h. Deut d'an ti ma voa diskennet enlia, e tebras bouet ep me devoue izom d'he deleur. Fallout a reas dezhi dioc'htu mont e kaer, hag ez ejont da iliz an Itron Varia da drugarecat Doue ; ha goudeze da gaout person santez Radegond evit testenia ar pez a ioa c'hoarvezet. Sevel a rea he unan er c'harroz ha disken anezhan evel pep den iac'h. Pare tre e voa en eun taol, rag abaoue ne deus ket bet an distera poan. Me ho les da zonzal pe guer souezet e voue tud he zi hag he oll anaouderien pe zigouezaz er guer.

An tad a lavar en eur echui : Kement ma a vercan evit ar brassa gloar a Zoue.

Missionou. — Euz a escopti Natchez, en Americ, e scrifer deomp evit digas ama ar c'helou trist euz a varo an Aotrou Pont, beleg missioner en escopti-ze. Eur gazeten catolic euz ar vro-ze a lavar : escopti Natchez en deuz ive he lod euz ar goaligner a sco hor bro reuzeudic. Ar 27^a vis guengolo eo maro, e Pas-Christian, an Aotrou Pont, person euz ar barrez-ze. Lavaret a rer eo maro gant an derzien dom ; hoguen cridi a eller eo bet taguet ive gant ar c'hlenvet speguz a ren dre ar c'harter. An Aotrou Pont a ioa ein den e creiz he vrud ; n'en doa nemet c'huic'h vloaz ha tregont. Daouzeg vloaz a ioa e voa beleg, hag abaoue en doa labouret evit silvidiguez an eno, da guntar e Pasagoula ha goude e Pas-Christian, hag en doa barrez-ze en doa roet mercou caer euz he aketid al labour, euz he speret mad hag euz a oll vertuziou ar beleg. He varo so eur c'holl braz evit escopti Natchez.

Eur gazeten all euz ar vro-ze, evithi da veza scrifet gant eur protestant, a ro ive eur venleudi vraz d'an Aotrou Pont. E parrez Passa-Goulla en deus savet eun iliz nevez ; e Pas-Christian en deus cressket ar vered ha savet eur voguer en dro dezhi, ha dalc'h mad e voa red dezhan beza e penn e labourerien, nemet an deveriou euz he garg her galfche e leac'h all. Ar pez a laca dreist oll souezet ar scrifagner protestant eo guelelet pe guer paour e voa bevet ha lojet an Aotrou Pont, pe guer calet buez a rene, penauz e c'helle beza ker mad da rei hag hen o caout ken nebeut he unan. Ar protestanted n'int boas da yelet ho ministred o veva er baourentez.

Ar pez a ra guella oll meuleudi an Aotrou Pont eo an daelou o deus scuillet hag ar c'hany o deus great dezhan.

ar gristenien gatolic euz he barrez. An Aotrou Pont a ioa guinnidig euz an escopti-ma, euz a barrez Plouzenel.

Rouan. — Al laeron ilizou a glever ato bep en amzer hano anezho. En derveziou tremenet o deus laeret eun iliz er Havr Casset o Ubus gantho an oll arc hant o deus cavet er sacristeri hag er c'hellou. Laeret o deuz ive ar vesseliou sacr ; hoguen, a drugare Doue n'o deus ket sclabezet an hostiou consacret. Cavet int bet lezet gantho kempen e touez eur c'houlporat fresc var an aoter. Eun toufet nebeutoc'h eo da viana e touez an touffion all. Siouas, dispac'herien an Itron o deus ket kementse a scorpul ; eno e reont goassoc'h evit evelse pa glascont afer oc'h an ilizou.

HISTOR ZANTEL
TENNET DIVAR LEUE AUR ESCOPTI
(TREDE HENNAD VAR NACHEZ)
Al leue doue. — (EXOD XXXII)

Ar bobl o velout e talce Moizes da ziskenn divar menez, en em zastumaz enep Aaron, hag a lavarez dezhan : Sao ! Gra deomp doueou da gherzet enn hor raok rak ar Moizes-ze pehini en deuz hon tennet euz a zouar ann Ejipt, n'ouzomp ket petra zo c'hoarvezet gantho. Aaron, o klask gounit amzer, ha distana d'ho c'hoant froudennuz, en eur c'houlenn digant ho ar pez ho devoa a brizussa, a lavarez d'ezho : Ma ! Tennet ar c'hlenved aour dioc'h diskouarn ho kraghez dibuc'h diskouarn ho mipten hag ho merc'hed, ha digasset ho d'ho rei eun Doue gant ho.

Ar bobl a reaz ar pez en doa gourc'hennet Aaron, hag a zigassaz d'ezhan ar c'hlenvedig diskouarn. Aaron, o veza ho c'hemeret, ho zaolaz da danzi hag a reaz gant ho eul leue aour. Hag ar bobl da gual Chetu aze ho toueou, o Israel, ann doueou ho deuz ho tennet euz a zouar ann Ejipt.

Aaron, o velout kement-se, a zavaz eun aoter dirag al leue, hag a leaz k'har dre vouez an embannel. Var c'hoaz em goul braz ann Aotrou.

Ha da vintin pa dent savet e kennigont sakrisou-losk, hag hostiou a deoc'h, hag ar bobl a zezaz da zibri ha da eva, hag a zavaz goude-ze da c'hoant ha da ebata (Peghen edro, pegher berboec'h eo ar bobl ha pe g'ghen nebeut ez euz da gounla var p'ezhan). Ar bobl Israel en deuz guelelet burzudou ar re vrassa ; prometet en deuz nevez-ze da Zoue n'en divije ken Doue nemet han ; ha sellit petra zo c'hoarvezet. Guelelet ho deuz ann Ejiptianed oc'h adori ann ejiptian. Guelelet ho deuz ann nont eul leue evit ober ho Doue anezhan. Na gounit ket var ho nerz hoc'h unan, mes peit Doue alies da greski ho feiz, ha d'ho kenderc'hel en he zoujanz.)
Hoghen ann Aotrou var ar menez a lavarez da Voizes. It, diskennit, rak pec'het en deuz ho pobl, kuiteet ho

An Otro Kermarker en deuz laret dimp en brezonek meur a bennad euz gwerzo ar barzed koz pere n'euz komzet diwar ho fenn.

Laret en devoa dimp kerentiach Breiziz ha Bretoned Bro-Zoz; diskleria eure dimp goude pegement, eun amzer zo bet, en deuz an daou bobl-ze en em hentet hag en em garet. An hini an-he en dije ezom zikour a c'houlenne digant egile. Gwenediz er brezel enep da César a c'houlennaz zikour digant Bretoned Bro-Zoz evel digant ho mignonned gwela. Ar re-man d'ho zro ho deuz bet laret penoz na vankaz kamet Breiziz d'he p'ho dije ezom. Ha pa oejont argaset en ho bro gant enebourien gri deut euz broio all, pelec'h e teujont? Da Vreiz davet ho breuder. Setu perag er blavejo 418, 449, 460 e oejont gwel'et a diado hag a vandennado braz o treuji ar mor war ho listri hag o tont da Vreiz da chomm. Er bla 469 e teuz kement euz an-he mac'h helljont rei 12000 soudard d'an impalaer romen Anthémius prest da veza tre-c'het gant he enebourien. War dro ar memez amzer e teuz Sant-Briec euz Bro-Zoz d'ar vro man da sevel eun eskopti er gear a zoug he hano. D'ar mare-ze kalz a zent a zeuz euz enezen ar zent da Vreiz e pelec'h e savjont eleiz a gouent hag a vanati. Mil bennoz d'ar gerent zantel-ze pere ho deuz labourat kalz euz hon douaro, ha roet da galz ac'hanomp al lezen gristen hag ar sevenidigez vad! Adaleg an amzerio-ze, beteg an daouzekvet kanvet goude donedigez hon Salver ha memez er bevarzekved an diou vro breton a zo bet kalz a zampred entrez-he ha goude kalz nebeutoc'h. Allaz! Enezer ar zent n'e deo ken ar pez a oa bet, ha goude beza heuliet mad epad pell amzer ar gwir relijion roet dimp gant Jezuz-Christ Mab Doue ho deuz pleget da falz-kredenno an den orgouilluz Luther, ha d'ar relijion fall a n'euz groet d'he euz he c'hiz ho roue fall Henri VIII. Euz ar vad a n'euz groet ho zent da Vreiziz goechall, n'helle ar re man biken ho fea, nemet plijout a rafe gant Doue e tigemerfent diganemp breman ar sklerijen am eump bet digant-he goechall, an anoudegez euz ar gwir relijion hag ar gwir iliz da b'hini n'euz sivoaz ho zud koz troet ho c'hein.

Setu eun nebeut grio diwar benn an daou devez kenta euz an Assamble evit ar brezonek. Bemnoz e vije c'hoaz en zal vraz al lezvarn kaniri euz ar c'haera war donio brezonek. Eleiz ar zal a otrone, itronezet, dimezet ha kalz a re all ha n'hellent dont ebarz a chomme d'he chelaou epad diou ter heur deuz tu hep skuiza tam. A amzer da amzer e vije eun dihan; e keit-ze meur a varz breton a n'euz lennet pe kanet pennado gwerzo brezonek hag a chelaouet gant kement a blijadur ma straket an daouarn goude beza ho c'hlevet euz an eil penn d'ar zal d'egile.

Na larin ket deoc'h muioc'h diwar benn an assamble; mes ho pedi ran c'hoaz da lakaat ar c'helo mad man en ho kazeten: Eun den oajet ha meurbed enoruz euz a barouz Prat, Ian-Mari Anthon, en deuz kaset wit an deio pemp kant lur ewit arme hon Tad Zantel ar Pab gant ar c'homzio man: *D'an Tad Santel ar Pab.* Eur

Breton pa n'hell-ken; rag koz eo, Tad Santel, a zigas d'eoc'h he brof, hag a c'hoall kent mervel diganeoc'h ho pennoz.

He lod he c'human euz ar pemp kant lur a zav da bevar-c'hap-pemp lur ha c'hanter kant. Mari-Jan ha Jan-Yvon Anthon diou verc'h dezhan ha Mari-Jan Anthon he c'hoar ho deuz roet an-nemorant. C. M.

AR MESSAER BERTELE.
C'HUEC'H VET PENNAD.

Archerien ar brovidans, pe mar deo guell ganeoc'h, al laeron a reaz eur c'house beteg anternoz. Dom Gusman a ioa gantha en he c'hodel eun dihaner-mintin, ha kerkent ha ma comansaz hennez da selancat, edo varzao o rei urs da vont en hent. Ne dejont ket dre donl an aeret, mes dre ribinou all c'hoas diessoc'h, dre ribinou ha goascou e kichen pere toul an aeret a alje c'hoas beza kemeret evit eun hent bras. Evel ne alle ket ar mul mont dre an hent a heullent, unah anezho a viscaz eun habit evel a vez gant potred ar muleet, hag a reas dre eun hent hirroc'h, mes aessoc'h, da gastel al laeron.

Castel al laeron a voa eun toul dindan an douar, eur vengleuz a voa bet tennet eals mein anezhi gudoh, hag a voa brema dilezet. Da guentia an digor euz an toul-ze a voa striz ha moan, mes goude ezee var ledinaat, hag er penn pella e voa evel eun gamb pe car zalvraz eleac'h ma rea al laeron ho c'heustennen. Pa zigoreschont, e voa eun tan braz en eur c'horn euz ar zal pe mar kirit, euz an toul mengleuz. Eur c'hleuzer ha goulou enha a ioa a istribil a zioc'h creiz ar zal, ha dindan e voa eun daol servichet mad.

Bertele a zigore braz he zaoulagad hag he c'hinor o velet kement all, ha Dom Gusman en doa plijadur oc'h evessaat pe seurt minou a rea. Evel ma zoa great nosvez vad, oa dlet ive caout lib-he-bao goudeze, hag al laeron, ep ho fidi, en em lakeas dioc'htu da ober pep a zenclennad.

Pa voa deut reud ho ler ha tom mad d'ho guinout, Dom Gusman en em lakeaz adarre da guelen Bertele.

— Guelet a rez, emezhan, messaer bihan, ama ne ket dioc'h ar seort ema an traou. Ama euzi eur goaz ne vezo ket pell.

— Biken, a lavare ato Bertele, me ne vezin laer.

— Gortoz, emez ar c'habiten, me ia da rei dit eur mestr scol, eur c'hellenner euz ar guella, eur potr hag a vouezo da guentelia eals guelloc'h eguedhon-me. Hag hen o c'hervel: — Joze! Joze!

— Ar c'heguiner eo a c'halve evelse.

Setu Bertele o velet o tostet eur paour kez chilgam ha n'en doa gar vad ebet; he zivrec'h a ioa moan ha reud evel diou guenneuden; he ziouscoaz a ioa savet, he benn a ioa sanelet en he choug en evelep doare ma en doa eun tamig torguen adre hag eun tamig torguen araog, da lavaret eo, e voa tort evel m'e dlet, coant zoken. Ouspen-ze ne vele nemet gant eul lagad ha ne

gleve nemet gant eur scouarn. Hoguen, mar doa tano he izili all, evit digoll a guementse en devoa eur fri kement hag eur zoug, eur frigoest da zivrec'h an nemorant euz he gonf, eur fri hag a vire outlian alies da velet petra veze etre he zaouarn, rag evel ma tede ar sclerijen dezhan euz eur c'hleuzer a voa a zioc'h he benn, he fri a daole peurliessa he skeud var ar pez a zalc'he etre he zivrec'h.

Joze a ioa abaoue deg vloaz keguiner ha potr a gamb e maner al laeron. An doare ma voa coezet etre ho daouarn a zo souezuz avoalc'h evit ma her mercfen ama.

Tud Joze a voa labourerien douar. Eun dervez ma voa elan unan euz he guerent, e voue casset e kear da guer-c'hat louzou d'an hini elan. An tortic kez en doa neuze pemzec pe c'huezeg vloas. Mont a reas ractal da di eul louzaouer, hag epad ma edot o pourehas dezhan al louzeier a c'houlenne; setu eun den o tont er stal, o tostet outhan, hag o lavaret:

— Ac'hanta! hag ho chouk?

— Va chouk?

— Ia, ho chouk, kempennet eo?

Joze o lavaret kementse a voue strafuillet oll, hag hen kuit ac'hanomp goude ep gortos na louzou na netra, rag sonjahar rease voa c'hoant da lamet digantha an dorguen a ioa var he chouk.

Ar pez en doa great d'an den-ze goulou oc'h Joze ha kempennet oa he chouk oa ma voa deut e kear, eun nebeut derveziou diarog, eun tort all da bidi al louzaouer ma voa digouezet Joze en he di, da lamet pe da blena ar zam a voa etre he ziscoas, hag edo eno abaoue o c'hortos m'en divijeal louzaouer amzer da entent outhan; rag al louzaouer-ze a ioa brudet bras dre he vouizieguez da renca izili digompez.

Hoguen an den ma on eus comzet anezhan; o velet Joze er stal, hag eun tort dezhan euz ar seurt ne veler nemeur, a zonjaz e voa hen an hini a voa o c'hortos compeza dezhan he dorguen, ha setu perag e reaz ar goulou on eus menket.

Mes etre daou Joze a ioa eat pell ac'hano. Dre ma zea e selle hep en amzer adre he guein, rag eridi a rea guelet o vont var he lerc'h kement louzaouer, kement medisin a voa e kear evit lamet digantba az beac'h-ze a ioa var he guein ha n'en doa c'hoant ebet den em zizober anezhan. Kerkent ha ma voa eat e meaz a guer, eleac'h d'erc'hel da vont gant an hent braz, en em daolas da vont adreus parkeier, coajou, menezioù, bete ma digouezaz e creiz eur vanden laeron.

Dom Gusman, pa her guelaz, a lavarar dioc'htu: sell, setu ama eur potr evel on eus-ni izom da gaout evit keguiner, ha mar teu pod ar zouben da vancout, hema a zervicho da voull evit ober unan nevez. Petra livirit, mignonet? Hema ne ket fri a vanc dezhan evit gouzout peur e vezo c'huez mad gant ar bouet, na choug evit douguen bec'hiou pa vezo izom. Hema a ellit da henvel keinek pe Fricc, evel ma kerot. — Ia, a lavaraz ar re-

all, hema n'en devezo izom moucher goulou ebet; gant he fri e rei he stal ha ma digouez deomp mont eun dervez bennag da abat, hema a roio deomp he zoug.

Joze a oa douar mement d'c'hoant c'hoarzin o clevet an c'haketerez-ze. Hoguen daer en devoe crognec'e voue enha ha casset da Gastel al laeron evit ober ar gueguin. Ha setu ar vicher d'rea abaoue deg vloas pa voue roet Bertele dezhan da guentelia.

Joze a ioa bet savet gant kerent christen evel ma zeo peurvuia an dud divar ar meaz. N'en doa ket ancounac'het Doue nag he relijion, ha mar doa chomet abaoue ker amzer e servich al laeron, e voa dre ma voa red dezhan. Ne voa nag eskuit na cre avoalc'h evit gallout tec he kuit; rag al laeron, pa zeant da ober ho zrouz, pa zeant er meaz euz ho c'hastel, a lakea da stanca an or pe an toul dre behim ez eat enha, eur pez roc he hag o doa beac'h an daou grea anezho oc'h he livral. Red mad oa eta d'an tortic kez chom en toul mengleuz.

Bertele a voue lak'et eta etre daouarn ar c'heguiner hag en he guichen e voue roet dezhan he log da gousket en eur c'horn euz ar vengleuz var eun nebeudig raden ha kinvi. Eur blijadur vraz e voue evit ar messaer bihan guelet he guentel'oc'h ober sin ar groaz hag o lavaret he bedennou araog en era rei da gousket. Bihan en em lakeas da lavaret he lerc'h hag oc'h ellit eridi, ho lavarar caloneg. Neuz e rebas ners ealon dezhan, ha pa voue mouguet ar goulou ha comanset al laeron da roc hat, Joze ha Bertele en em lakeas da gozeal goustadic. Ar c'heguiner a gontas d'he gamarad nevez pegement a drubillou en doa bet da c'houzaonabaoue ma edo eno. Morse n'en doa kemeret perz e laeron srou ar re ma edo etre ho daouarn, morse n'oa bet talvezet dezhan mont d'ho heul petra bennag ma o devoa clasket meur a vech he gas gantho, ha ma voa bet goal lak'et meur a vech dre na rea ket evel d'ho. Pell da guemeret skuer dioutho e prezegue dezho ahez hag e rebeche dezho ho goal vuez. Gouscoud evel ne alle ket tec he kuit, e voa red mad dezhan ho zervicha ha beva he unan gant an traou a zigassent d'ho c'hastel. Bertele en devoa ar memes sonjou, ha lavaret a rea ato ere e voa guelloc'h gantha mervel evit mont da heul al laeron nag ho zicout da ober ho zorfjou. Araog en em rei d'ar c'housket, an daou vignon, evel daou abostol, o doa great ho zonen da brezeg c'hoaz a zoare d'al laeron, ha ma na ellent goumit netra varnezho, da glase an tu, e guis pe c'his da dec'het ha d'en em denna euz a dre ho daouarn.

(Eur pennad-all ar sklerijen)

Hano ar Zent evit ar Sizun-ma.

- DILLUN 11 DU. — Sant Martin, escop.
- DIMEURS 12. — Sant Martin, pap ha merzer.
- DIMERC'HER 13. — Sant Stanislas Kostka.
- DIZIQU 14. — Sant Didas.
- DIRGUENER 15. — Santez Gertrud, Guerc'hez.
- DISSADORN 16. — Sant Melani, escop.
- DISSUL 17. — Trede sul varnugent goude Pantecost. Eisevet an Dedi.

Abostol ar zul :

Va breudeur, kemerit skuer diouzhin, hag evessait evit ma reot evel ar re a heuil ar skuer oc'h eus gullet ganhen. Rag calz a zo, evel ma em eus comzet deoc'h aliez anezho, ha ma comzan c'hoas brema en eur vouela, hag en em laca enebourien da groas Jesus-Christ. Ar re-ze en em zaono. Ober a reont ho Doue euz ho c'hof; fougue a guemeront gant ar pezh a dlefe ober ho mez, ha ne gavont blaz nemet e traon an douar.

Hoguen evidomp-ni a vef ama evel pa vemp etouez ar re so en Env, a beleac'h ive e c'hortozomp hor Zalver Jesus-Christ bon Aotrou, pehini a jencho hor c'horf, a zo brema ken dister, en eur c'horf henvel oc'h he gorf glorius; ha kementse a rai dre ar memes gallout en deus da lacat pep tra da zuja dezhan.

Ragse-ta, va breudeur ker, va breudeur ker caret, c'hui va laouenidiguez ha va c'hurunen, dalc'hit eta evelse mad da Zoue. Pidi a ran Evodia, pidi a ran Sentieha, da gaout ar memes mennoziou e kenver hor Zalver. Ho pidi a ran ive, c'hui pehini so het ganhen hag oc'h dalc'het mad din em labourou, ho pidi a ran da guemeret soursi euz ar re o deus poaniet da lacat prezeg an aviel ganhen, gant Clemens ha gant ar re all o deus va zicouret, hag a zo scrifet ho hanoiou el levr a vuez.

Lizer Sant Paul d'ar Filippis. G. M.

KEMPER.

Scrifa a rer deomp euz a Blouider :

Ho pidi a reomp da lacat er gazeten vrezoneg al listenma euz ar re o deus roet deomp da gas deoc'h ho ofrans evit arme ar Pap en izom ma en em gaf brema :

Table with 2 columns: Name and Price. Includes items like Rivoal, person Plouneour (10 lur), Tromilin, vikel e Plouneour (10), Caer, vikel e Plouneour (20), Rohel, person Goule hen (30), Ar Rouz, person Trefez (30), Ar Guenn, vikel e Kerlouan (10), Abiann, vikel e Kerlouan (25), Pierre, person Plouider (30), Saout, vikel e Plouider (20), Guena, vikel e Plouider (10), Lois Kerheve, mevel e parrez Plouneour (5), Marijann Cloast, matez e parrez Goule hen (6), Total 206 lur. Below: C'huac'h mis diaraog kar Lesneven e deyoa roet evit ar zouavet a arme ar Pap (1,500 lur), Belcien canton Lesneven a roe ive (500), Eun nebeut tud divar ar meaz a zigasse (400), Hag euz den a barrez Plounevez-Lochrist a zigasse er memez amzer (600), Da lavaret eo, mil scoet etrezho (3,000 lur).

Al listen digor e Kemper, e ti an Aotrou Kerangal evit sicour ar Pap en he izom brema, a ia caer en dro.

Table with 2 columns: Item and Price. Er sizun all e voa savet da (2,392 lur), Er sizun-ma ez eus savet (6,175), Etre an oll bete vrema (8,567 lur).

Er zom-ze ne ma ket c'hoaz ar pezh so deut euz a Blouider na calz a zommo all eat dre hentcho all. Er sizunvezioù a zeu oc'h eller esperout e kendalc'ho an ofransou da zigonezout, ar pezh a lacaio, evel ma lavar an Impartial, escopti Kemper da zerc'hel, evit hon Tad Santel ar Pap, ar memes reng evel a zalc'h evit Breuriez ar Feiz.

Etouez ar prizioù a roer bep bloaz e pep corn a Frans evit al labour douar, e velan rei ive prizioù d'ar vistri scol a boagn da zezki al labour douar d'ar vugale so gantho o kelen. Hoguen setu ama brema eur vestrez scol hag en em laca ive e renk evit ar prizioù er gvar à Lil (e Departamant an Nord) abalamour d'ar c'hentelhou a ro d'ar merc'hedigoù so fiziet enhi, var an doare da gas enn tieguez en dro. N'eus ket pell e lennen ive, e Cazeten ar Meziou, e voa eat, en eun aradeg, ar priz kenta gant eur plac'h iaouank. E guirionez, eur goueriadez e deus kement a izom da c'houzout penauz en em guemeret evit ober mad al labour var dro enn ti, evel en deuz eur c'houeriat da c'houzout penaus trei eur bom douar.

Evit doare, caer so digas ed er vro, n'eus ket c'hoaz avoalc'h, hag ez a ato var gueraat.

E costez ar Suis ema an erc'h teo evel e creiz ar goan, hag eo red digas al loened euz ar menezioù d'ho c'braou, calz kentoc'h evit n'oar boaz d'hen ober.

Eur zaos, pinvidig ha chasseur braz, en deuz eur mevel hanvet Ioun, hag a gas d'he heul bevec ma za da c'hadona. Ioun a zo ijinus bras dioc'h ar vicher: dreist oll eo eur mestr evit anaout, dioc'h ar roudou, pe seurt loen a vez tremenet dre eul leac'h. Evit amprou he vevel, ar zaos a zonzaz euz dervez tenna dezhan an taol-ma. Epad ma edo Ioun pell diouthan, e tivisez he voutou, hag en em lakeas da vale var begou he dreid. Goudeze e c'halvaz he vevel, hag e lavaras dezhan :

— Ioun, me gaf din ez eus tremenet eur preiz bennag dre ama. Guel ha te allo anaout pe seurt loen eo.

Ioun en em laca da zellet piz oc'h ar roudou, ha ne lavar guer.

— Ahanta, eme r zaos, roudou pe seurt loen eo arzeze?

— Ar re-ma, aotrou, eme Ioun, ar re-ma so roudou eur porc'hel.

Ne ouzon ket pe seurt min a reaz ar mestr o elvet he vevel divinour. G. M.

PRIZ AN ED.

Table with 2 columns: Location and Price. Kemper - 21 Du, Pont-Nabat - 31 Here. Items include Guinis (46 lur, 72 c / 47 lur, 92 c), Segal (43 lur, 60 c / 42 lur, 64 c), Eiz (40 lur, 52 c / 44 lur, 43 c), Ed-du (8 lur, 84 c / 9 lur, 79 c), Kerc'h (12 lur, 63 c / 44 lur, 43 c), Avalou-douar (5 lur, 80 c / 4 lur, 63 c).

Ar Gerant: AR. DE KERANGAL. Kemper, moulet gant AR. DE KERANGAL, Moulet an Escopti.

FEIZ HA BREIZ,

KELOU A BEP BRO, HA KENTELIOU VAR BEP TRA,

DIGASSET BEP SUL

Da guement Christen a goms ar brezounee.

Eun Abonnamant d'ar Gazeten à goust :

Table with 2 columns: Item and Price. Evit eur bloas (DAOU SCOUET), Evit c'huac'h mis (EUR SCOUET), Evit tri mis (C'HUEC'H REAL), Eur gazeten ebken (DAOU VENNEC).

Ar bacamant a dle beza great araog caout ar gazeten.

ALIQU.

Ar scrijou a ve c'hoant da lacat er gazeten a dle beza adressi oll d'an Aotrou MORVAN, Beleg e Kemper.

Ar paemanchou a dleer da adressi d'an Aotrou SALVIN, ebken. An abonnamant a guemerer e ti an Aotrou SALVIN, librer, ru Kereon, e Kemper.

KEMPER, 16 Du 1867.

Lizer Aotrou Escop Kemper ha Leon evit gourc'hemmen tri dervez pedennou.

Kemper, 7 Du 1867.

AOTROU PERSON.

Evel ma c'houimp ervad, dre an amzerioù ma en em gavomp enno, e teuje ar c'henta Pastor eus an Iliz da rei he vouez da glevet, on eus gortozet ma en divije comzet : hag e tenomp hirio da rei deoc'h da anaout penauz en em glem oc'h ar bed oll.

« Savit ho taoulagad, emezhan, hag e velot, hag e vouelot c'huero o velet ar fallagriezou euzuz a ren en Itali reuzeulie. Gourc'hemennoù Doue ha lezennou an Iliz santel n'eus nemet dispriiz evitho; an dud dizoue a zao sounn ho fenn hag a ra ho mistri. Ac'hano e teu an oll reuzioù hag an oll goallou on euz ar c'hilac'har da velet; ac'hano e teu ar bandennoù tud-ze n'eus nemet fallagriez oc'h ho heul, tud hag en em zao a enep Doue dre ho droug-pedennou, a sclabez kement a zo sacr, a vress dindan ho zreiz guirioù Doue ha re an dud, a aloub dre ners tra ar re all, a c'hilac'har an dud dinerz hag ar re baour, a gresc an niver euz an intanvezet hag euz ar vinoret, ha brein ma zeo ho c'hilac'har, a ra ho oll gallout evit rei ho goalc'h d'ho oll ioulou fall, oc'h ober evelse ar brassa gaou oc'h tud ho bro zoken. »

« Petra bennag ne eanomp da bidi ha da aspidi, euz hon oll gallout, an Doue pinvidig e trugarez, da gaout ar vadelez da lacat an dud-ze ker mafeurus da zistrei da hent al lealdet, ar relijion hag an devosion, ne allomp ket gouseoude chom ep rei da anaout an danjeroù braz a zo oc'h hor gourdrouz en heur-ma a denvalijen. »

« Didrouz e c'hortozomp ar pezh a zigouezo; lacat a reomp hon esperans en Doue Salver a zo hor scoazel en trubuilhou, ha ne lezo ket mezec'at ar re a laca ho fizians enha. »

Goude beza roet menleudi ha diskuezet, dre gomzou

caer he anaoudeguez vad d'an dud calvez a zo en em voestlet evit he zifet; goude beza moulet ive an ho broù coutachus chomet fidel dezhan ar Papa-zao he vouez gant eur vajez da euzuz Nikel Jesus-Christ, ep en em neclhi stam ebet gant an danjeroù so en dro dezhan he unan, en em zao gant ar zao enep an d'ar maistrer ar Pologn, enep ar lezennou anavez great evit lacat ar vro reuzeulie-ze da zinac'h he feiz, lezennou hag a dor, hag a zistruch ar gant en deus pep den e kement a zell oc'h ar feiz hag oc'h ar gousifians. En em zavel a ra a enep an harlu, ar prizioù, ar voaskarez a bouez var tud Pologn dre zisgaldet an nep a lam d'gantho ho madon, ho haskin hag ho flastr e pep guiz.

« O velet ar reuzioù hag ar vant-cao-ze coezet var an Iliz, hoc'h allomp moia ma c'hellomp, hor breudeur henorapl, dre ho carantez, dre ma zoc'h douguet evit mad an Iliz catolik, dre ma zoc'h ive douguet meurbet evidhomp, da unani ho pedennou ar re c'hoeka gant hon re; pedit hag aspidi ep ean, c'huac'h, hag hoc'h oll befeien, hag an oll dud fidel, evit ma talc ho Doue sonch euz he drugarez, ma listroio divarnomp he zifouians, ma lamo divarnomp ha divar he liz ar mor-ze a voalerioù; pedit evit ma roto he zicour hag he scoazel off-c'halloudeg da vugale ar memez liz, a zo, conis lavaret e pep bro, ha dreist oll en Itali, e Russ, hag e Pologn, kement a zanjerou en dro dezho, hag o deus kement da c'houzaon; pedit evit ma kendalc'ho ar vugaleze ha ma ho lacai da greski ha da greaat bemdez er feiz catolik hag el lezen gristen; pedit ma lacai da vont e mognet mennoziou difeiz enebourien an Iliz, ma ho zenno euz an islong a bec hejou ma emant d'ha ha ma ho lacai da vale en hent euz he c'houre nemennou. »

« Rag-ze e fell deomp e ve gourc'hemennoù en hoc'h escoption tri dervez pedennou, ar c'huac'h mis kenta divar hirio, hag ar bloaz kenta evit ar broioù so en tu all d'ar mor. Evit lacat ar gusfemen fidel da zont gant muioc'h a brez d'ar pedennou-ze great a vanden, ha da bidi Doue ive en ho fart ho unan, dre drugarez an

Aotrou Doue, e roomp eun induljans leun (plenier) hag ar pardon euz ho fec'hejou d'an oll ha da bep unan euz ar gristenien fidel, gant ma cofessaint ha ma communiant, ha ma teuint gant devosion d'ar pedennou epad an tri dervez, o pidi Doue, evel ma fell deomp, evit an izomou e deuz hirio an Ilis. D'ar gristenier fidel o devozo da nebeuta eur guir gueuz en ho c'halon, hag o devozo great ar pez a c'houre hemennomp en unan bennag euz an tri dervez, e roomp, evel ma zeo custum an Ilis da rei, eun induljans a seis vloaz hag a seis coraiz, evit ar pinijennou a elfent da gaout da ober, e pe c'hiz bennag e tlie beza great ar pinijennou-ze. »

« An oll induljansou-ze, pardon euz ar pec'hejou hag euz ar pinijennou da ober, ho rei a reomp, en hon Aotrou, d'a eneou an dud fidel eat euz ar bed-ma ha maro e carantez Doue ; ar gristenien fidel a ello ho lacat da dalvout evitho, ha netra ne ello miret oc'h kementse. Erfin netra ne ra muioc'h a blijadur deomp eguet an d'ro a gavomp da ziscleria deoc'h, eur vech c'hoas, peguement ho caromp e Doue ; hag evel eur merc sur euz ar garantez-ze, recevit ar venediction abostolig a roomp a greiz calon, deoc'h, hor breudeur honorabl, d'an oll veleien ha d'an oll dud fidel a zo fiziet e pephini ac'hanoc'h. »

« Roet e Rom, e Sant Per, ar seiteg a vis here 1867, an eil bloavez vartuguent abaoe ma zomp Pap. »

PII IX PAP.

Hor breudeur ker, ne oufemp ket lavaret hirroc'h evit a lavar hon Tad Santel. Avoalc'h a lavar evit mont bete gouelet ar c'halonou. A hept all anaout a rit ar pez zo digouezet, ha gouzout a rit petra da zonzal divar ho fenn. Bandennou tud divroet so en em zestumet dindan eur banjel ha ne deo anzavet gant pobl ebet. Ar bandennou-ze a ra ar brezel d'ar guir, d'an urs vad, d'ar relijion, hag e comansont ho zorfou din a dud gouez dre ober goassa hag a ellont d'an Iliz ha d'ar Frans.

Ar boblou hag ar re zo en ho fenn o deus guelec'hozont ar bandennou nevez-ze a dud anter-c'houez pere ne anavezont na guir na gallout den ebet, a guemer ho ebat o lamet ar peoc'h euz ar broiou, a ra fae var ar rouanet, a dor ar c'hevredigieziou so etrezho, hag a vac'h harziou ar broiou a dlient da zioual. An Impalaer n'en deus ket gallet gouzaon pelloc'h traou ken indin ; he zoudardet caloneg a denn ar c'hleze eur vech c'hoaz evit difen ar justis hag ar virionez.

Doue a vennigo ar re a ro skoazel d'he Ilis ; evel ma plij gantha pourliessa en em zervichout euz an dud evit aferiou ar bed-ma, en em zervicho anezho evit kenderc'hel etouez ar bobliou seven, ar pez a ra ho buez hag ho assurans.

A dra sur, an Iliz so bet stourmet outli c'hoas ker goaz ha brema ; naontec cant vloaz so e tale'h mad a enep oll nerz an ifern, a enep oll gallout an dud, a enep an hereziou, a enep an oll ioulou fall ha kement a glascont da ober evit he discar. Miret a ra comzou hor Zalver, ho discleria a ra d'an dud, rei a ra dezho he

zacamanchou ; hi eo pilier ar virionez. Morse ne vezo distrujet ; gouscoude Doue oc'h he difen a fell dezhan er memez amzer e pedtemp hag e rafemp oberou mad evithi. Bete vrema hon escopti n'en deus ket great ar scouarn vouzar oc'h mouez ar Brovidans ; casset en deus tud iaouane hag o deus stourmet gant enor ; casset en deus sicourou ep marc'hata ; hoguen arabat eo e teufe hor bolonte vad da iena, eun taol scoas zo c'hoaz izom da rei.

Ne ancounac'haomp ket penaus plega d'an dispac'herien ha lezel an Tad Santel ar Pap da goeza etre ho daouarn, a ve lacat ep dale ar bobliou da goll ho frankiz hag ho danvez ; ep dale perc'hen ebet ne ve mestr d'he dra ha ne ve anavezet he wiriou. Arabat eo en em lezel da veza touellet ; ar pez so digouezet kentoc'h a ziskuez petra zigouesse divizatoc'h.

Lavaret e vezo deoc'h e tlie an Tad Santel plega, ha discregui euz ar pez zo kement a ioul da lamet digantha. Neus nicun hag a ve nebeutoc'h mestr evit ar Pap da ober eun dra evelse, nicun hag a else nebeutoc'h evithan discregui. Evithan he unan ne vev nemet dre an diouer hag an dilez a bep tra ; evel an 263 Pap all so bet en he raog, e c'houzanvo kement a falvezo da eur bed diskiant hag hegared he lacat da c'houzaon, mes kenderc'hel a rai he frankiz, deski a rai ar virionez ha miret a rai ar pez zo bet fiziet enhan.

Ha cridi a rit-hu, hor breudeur ker, e rer kement a drouz evit caout Rom epken hag an nebeut meutadou douar so var he zro ? Petra rafent-hi gant eur guer ha ne deuz enhi nemet ilizou ha lec'hioù a zevosion ? Ne m'aint ket nemeur e poan gant ar gueunioù hag an douarou difrost so en dro dezhi. Ar pez a fell dezho eo en em guemeret oc'h ar beli, oc'h ar gallout, eleac'h ma zeo crea ha ma zeo muia respetet, ar pez a fell dezho eo lacat da devel ar vouez-ze a zo en em zavet ato adreuz an oll amzeriou, evit condaoni an errol, evit condaoni ar re en em zervich euz ho nerz evit mac'ha pe goasca ar re all, ar vouez-ze pehini a zao ato cre' evit discleria droug ar pez zo droug, ha mad ar pez zo mad.

Rage, evit senti oc'h gourc'hemennou an Tad Santel a c'houlen pedennou digant ar gristenien fidel, ha goude beza en em glevet gant hor breudeur honoruz ar Chaloniou euz hor c'hathedral

On eus gourc'hemennet hag e c'houre hemennomp ar pez zo ama varlerc'h :

ART. I.

Tri dervez pedennou a vezo great en hon Escopti. Eur miz amzer a roomp azaleg an deiz ma vezo bet recevet al lizer-ma. An arc'hbeleien, personet caution, personet, beleien ar c'houenchou, a choazo, euz ar miz-ze, an tri dervez a gavint dereata hag aessa evit an dud fidel.

ART. II.

Evit an tri dervez-ze e vezo canet Litanioù ar Verc'hez, gant ar verset *ora pro nobis* hag ar beden *Concede canet e vezo goudeze ar salm Deus in adiutorium* gant

ar verset *Domine salvum fac Pontificem nostrum Pium*, hag ar beden evit ar Pap ; *Tantum ergo* ; ar beden *Deus qui nobis* ; ar venediction. Evit echui e vezo canet teir guech ar *Parce, Domine*, ha goudeze ar beden *Deus qui culpa offenderis*.

ART. III.

Ar re a vef er c'houenchou hag ar gristenien devot a rai communionou hag oberou mad evit hon Tad Santel ar Pap.

ART. IV.

Al lizer-ma a vezo lennet en oll ilizou ha chapelou euz hon Escopti ar zul kenta goude ma vezo bet recevet. Roet e Kemper, dindan hor sin ha siel hon armoù, hag enep-sin Secretour hon Escopti, ar 7 a vis Du 1867.

† RENE, ESCOP A GUEMPER HAG A LEON.

Dre an Aotrou'n Escop :

TEPHANY, Chaloni a honor, Secretour.

Guech all eur bars paien a lavare, eun den divlam, eun den leal, eun den stard en he lezen, ne alje netra he ziscar ; n'en divije ket a aoun ha pa velje pep tra o coeza en dro dezhan, pa velje ar c'hæriou, ar broiou, ar bed oll distrujet. Etouez hon tadou coz guechall ez oa ive brezelourien hag a rea ho fougue ne voa netra guest da ober aoun dezho, nemet, emezho, coeza a rafe an Env d'an douar d'hor flastra. Hoguen an dud-ze ne anaient ket ar guir Doue, ne anaient ket ar guir ners calon ; n'en em fizient nemet enho unan, en ho nerz ho ho unan. Ho c'homzou faeus ne voant nemet brabanse-rez ; aliez ar re anezho en em fouguee muia hag a voa muia fouguet gant ar re all n'o devoa ket a galon avoalc'h evit gouzaon eur boan speret, eun nec hamant bennag pa deue da stourm outho. Eun daryout dister, eur c'hezaden a ioa avoalc'h evit ho discar.

Ne deuz, ha pe ell beza var an douar eun den ha ne ell beza discaret gant netra nemet ar guir gristen, sclerijennet gant ar feiz, harpet var breac'h an Aotrou Doue. Evit caout eur skenden euz eun den evelse stard ha ferm, euz eun den ha n'en deuz aoun rag netra, ne ne deus nemet teleur an daoulagad var hon Tad Santel ar Pab, var Pii Nao ! Setu eno e guirionez eun den ha ne ell netra he ziscar. Guelit herc'hez he enebourien ! Ne deuz oc'h he heul nemet var dezho hag ar zantelele peinet var he dal. Mad ne ket hen eo a zo discaret, he enebourien eo, ho c'halonou so, tenereet, hag oll e coezont d'he dret ! Mes ive eno em an den stard ha ferm dre ar feiz, an den renet gant dorn Doue, hag harpet var he vreae'h, ha ne deo ket Pii Nao epken eo a ro deomp ar skuer euz a guementse. Hoguen abaoe Sant Per treac'h d'an tyrantet hag hen chadennet er prizon, abaoe Sant Leon o cas var he guiz eur roue divadez hag he arme ep niver, abaoe Sant Gregor seiz o terc'hel penn he unan epken d'an oll revraz euz an douar, bete Pii Seis, beteg an hini so azezet hirio var gador Sant Per, ar Pab o deuz diskuezet ato n'o devoa aoun na rag

barrou amzer na rag goal evel na rag enebourien na rag oll gallout hag oll nerz ar bed, ha he voa ket evit d'he en deo lavaret Jesus-Christ e save he Ilis var an tenn ha ne alje marse d'ouar an tenn beza treac'h dezho.

Evelse ta an den stard ha ferm, eo an den a stourc'risten, mad a heul lezen Doue, a laca he dizians eun cour an Eny ha ne ket en he nerz he unan, rag evit ar longuerien a grede, deus galloud, avoalc'h anezho ho unan evit d'he stard en ho za ha cas ho meneziou da benn, dale he mad e veler ho zonzou o vont e mogut ha discaret e vezont ato pa zonzier nebeuta.

Ama izeloc'h e vercomp divar ben Pii Nao ha divar benn eun tron daourd'ent euz ar virionez anezho, anezhi, da lavaret eo, daou dostent euz an ners calon a ro ar guir feiz da eur christen ha da eun justeniez.

E Rom, aberz ar c'hardinal Patrizi, ez eus gouez hemennet tri dervez pedennou evit fragarcat Doue da veza laket ar c'holera da gana ha da veza digasset glo evel ma c'houlennet, ha neuz evit goude difenna scoazel d'an Iliz. An tri dervez pedennou a vezo great ive divizatoc'h en holl broiou christen. (Guelet oc'h euz hueloc'h lizer an Aotrou Escop Kemper.) Ar beden a zo bepret creoc'h evit an oll armoù. Breac'h an Aotrou Doue a vezo ato trec'h d'he enebourien.

PAP XI III.
Ervet Gazelen ar c'hreizez, e kre Sant Anj, e Rom, ez eus tremenet un arvez an traou-ze ha n'eus den gnest d'ho merca evel n'eo illec. Eno euz tremen daou c'hant prizonnier, euz an dispac'herien, euz a botred Garibaldi. Edont oll an den euz ar zantou traou an ti, pa veljont d'ouar prizon o teger, hag en euz gnest e guemerontont tre betegenhos an den euz ar Pab. Ep d'he he he heul, ez a en ho zouez tal zantele, hag a vellez o luguerit var he dal. Chom a rafe en he breiz, hag evit lavardezhos : Setu me bma, va mignonet, gallet he d'ha-zoc'h an den, crizez a zun goad an t'ad, evelse ma lavar deoc'h ho Jeneral, Petra ? Oll oc'h eus kement an armoù evit dont da stourm ouzin, hag ar vellez num nemet eur paour, keuz coz, so. An oll armoù a lavaret, evit ma e eur guellien o yondal euz ar va. An dispac'herien o he zonzal a ioa en em dalet oll d'ha daou d'ha Pii Nao, he galon tenereet, an daelou en he zoulagad an ners ledus da velet e creiz an oll dispac'herien zebstouet o dret, hag o rei eno eur skendgen euz an t'ad gant he dret. Au Tad Santel a zo tostaat oc'h meur a hini anezho hag en deus lavaret : Cum va pugnat omnia eusit a zillad, c'hu oc'h euz rom eus bouloù c'hu d'ha d'oc'h lienach ; mad ar Pab an hini ma zoc'h dent da ober ar brezel dezhan, a ia d'ho kuisca ha da lacat ho cas da gaout ho tud, evit ma casol dezho he venediction. Evel kent, arag mont kuite real, evel calouet ma zoc'h, eur retired evit mad hoc'h ene abalamou d'ha Pab eo her goulen diganeoc'h.

Meur a hini euz an dispac'herien-ze a vouele d'ha Pab ho bennigaz oll.

D'he adversour bepret karantezuz,
Dre he zousder eo henvel ouz Jesus ;
He zaoulagad o para var ar groaz,
E sturi 'r vag ker sioul ha biskoaz.

O Tad Santel, etc.

Ha koulskoude e sav ar goagou mor ;
Enep ar Pab an dud fall e fulor,
Evit gallout koll ar relijion,
A glask diskar hon Tad divar he dron.

O Tad Santel, etc.

Lammet ho deuz eul lod euz he stadou
Ho lemel oll a fell d'ho goal ioulou :
C'hoant o dese gant spern he guruna,
Evel he vestr, gant skarlek he viska.

O Tad Santel, etc.

Gant an avi euz he deir gurunen,
Paotret Satan a iud a bouez ho fen :
« Nan, emezo, kaout ar Pab da Roue
« Na blij ket deomp, ni garal liberte. »

O Tad Santel, etc.

Ha ni ive a blij deomp ar frankis,
Ni Bretonet, bugale d'an Illiz,
Rak-ze ar Pab a de-beza Roue
Da zere hel frank plas an Aotrou Doue.

O Tad Santel, etc.

Enep Doue pa stourme tud difeiz,
Dezo gueich all respounte paotret Breiz :
« Peoc'h, emezo, gant ho lezen neve,
« Ne ket deoc'hu da c'houarn hon ene. »

O Tad Santel, etc.

Ni zo euz goad an dud kalounek-ze ;
Evidomp-ni ne ket chenchet Doue :
Ne ket chenchet kreden hon tadou kos ;
Per-ze bepret porzer ar baradoz.

O Tad Santel, etc.

Nizalc'h eta d'an Illiz, ha d'ar Pab
En hon touez peb mam lavar d'he mab :
« Euz da zivree'h m'an deuz ar Pab ezom,
« Ke, va bughel, ke d'he zifon e Rom. »

O Tad Santel, etc.

AR MESSAER BERTELE.

SEIZVET PENNAD.

Bertele a dremenas meur a zizon e Castel al laeron. Bemdez couls lavaret, Dom Gusman hag he gamaradet a iea da ober ho zivree, ha bevech ive couls lavaret e tistroent d'ho m'engleuz ho godellou leun a aour hag a arc'hant. Ar c'habiten en devoa ebat o tiskuez d'ar messaer bihan a peziou guenn ha melen-ze, o clase he zeseo ; hoguen ar potrig a zalc'he mad ato, hag evel ma voa en em glevet gant Joze, en em lakeant ho daou da brezeg d'al laerom. Cridi a ellit ar hotred vad-ze ne reant nemeur a van evit clevet daou vec'hieg o comz outho.

Diou vech dreist oll e voue tost da Vertele beza goal laket gantho, defot na dea d'ho heul. Eur vech ec'h eljout gouzout e voa eal'e beach perc'hen eur maner a ioa tost dezho, ha ne voa chomet da zional an ti nemet servicherien, coz evel an douar. Eun dro vrag evit al laeron. Hoguen he voa digor ebet var ar maner-ze nemet eur prenestic rond ha striz, ha ne voa nemet Bertele moan avoale'h evit mont dre an toul-ze. Ho goalc'h a rejont eta o clase he gas gantho, ha meur a grabanad a bacaz ar potrig abalamour ne felle ket dezhan senti, ha muioc'h en devoue c'hoas pa deujont en dro, rag n'o doa ket gallet ober ho zaol. Nicun afezho n'en doa gallet mont dre an toul prenest, ha mitizien ar maner n'oa morse falvezet dezho digueri nicun euz an d'ho petra bennag ma o devoa goulennet digor gant calz a sevenidiguez, ha ma voant en em ziskuezet evel marc'heien guisket e guis prinset euz an huella lignez.

Eur vech all e cleffont hano euz eur beleg coz a ioa en em dennet en he di he unan da dremen he vloaveziou diveza. Izom a ioa da c'houzout ha bez en doa an den-ze eur iar-goz, ha mar en doa, pelec'h e voa laket gantho. Setu Dom Gusman o tenna euz he gorn-tro eur zoudahen, eun tog, eur viscamant cloareg abez, hag oc'h ho digas da Vertele en eur lavaret dezhan ho lacat var he dro evit mont da di ar beleg coz-ze. Great e vije he c'hinou dezhan evit gouzout petra en divije da lavaret ha da ober. Ma na elle ket samma ar ialc'h, da viana e c'helje rei eun ditour bennag divar benn ar pez a vije da ober evit he c'haout. En dro-ma Bertele a voue tost dezhan en em garga euz ar guelridi a c'hoanteat da rei dezhan. Ne ket ma falvesche dezhan ober al laeraden a ioa c'hoant a raje ; mes ar zouch a ioa deut en he speret e c'halje rei eun ali mad d'ar beleg coz-ze, hag e c'affe he unan tro da dec'het ha d'en em denna a dre daouarn al laeron. Hoguen eur zouch alla deuas dezhan ive : Joze a ioa bet ker mad outhan, ha Joze a jomje ato en tout mengleuz ; n'en divije den d'he zicour da vont ac'hann. Ar zouch diveza-ma e voue ar grea, hag ar Messaer bihan a davaras crenn ne daje biken da laerez na da drompladenn.

Neuze ar potrig kez a voue bazaret adarre, hag evel m'en doa Dom Gusman disfizians anezhan hag euz ar c'heguiner, azalec neuze bevech ma zeant er meaz, e veze lezet daou euz ar vanden da zional ar maner. Ne zerviche eta mui dezho sonjal tec'het kuit. Gouscoude an disfizians-ze eo he zaveleas.

Bertele ha Joze, pa en em lakeant da brezeg d'al laeron, o doa evessent e voa tri anezho hag ho zilaoue guelloc'h evit ar re all. Da viana he luskent ket a leoudouet oc'h ho c'hlevet. Clask ar rejont tro da gomz oc'h an tri-ze en ho fart ho upan, hag o veza clevet gantho e voa e guirionez en desperet dezho eo e choment da ober ar vicher a reant, en em gleichont da glasc an tu da dec'het kuit ho femp. An tri laer a reaz enn nosvez neuz da veza elan. En em lacat a rejont d'en em ruilla ha d'en em glem evel pa vije crog ar glient enho. Antronoz ar c'habiten oc'h ho guelet drouglivet oll, a lavaras dezho ehom

en dervez-ze da zional ar maner. Kement-se dres eo a glaskent.

A benn eur pennad goude ma voa eal'al laeron en hent, ar pemp-ma a guiteaz ive ar vengleuz. Ne deujont ket er meaz ep poan, rag ar meaz braz a ioa lakat da stanca an or, hag ho femp e vouent pell arag ma c'heljont he finval hag ober eur riboul da ellout mont kuit.

Eur vech er meaz euz ar C'hastel, en em lakejont da redek en dra c'hellent evit pellaat buana ma c'haljent ac'hano, ha sollet a reant a zion hag a gleiz, gant an nec'h o devoa na zigonesje al laeron gantho. Hoguen ar chilgam Joze ne alle ket hevilla ar re all, hag en em lakejont d'he zouguen var ho dionscoaz an eil goude eguile evit gallout bale gant muioc'h a diz. Ne gollont ket ho foan o touguen ar paour kez strobet, rag an dud a zigoueze gantho ho c'hemere evit micherourien, hag a veule ar vadelez o doa da zouguen ho c'hamarad mac'haniet. Ne deuz c' sonch den e voant laeron tec'het dioc'h ho banden, hag e c'heljont kerzet evelse bete'n noz.

Pa deuz an denvlijen varnezh, edont en eun draonien tost d'al leac'h ma voa bet sammet Bertele ar vech kenta. Skuiz maro oant, ha lod anezho ne voant ket gueset da vont larcoc'h. Clasc a rejont eta raden seac'h hag e rejont eur c'houisk eno.

Antronoz vintin e vouent dihonet gant eur zon skiltruz. Bertele a zavas buhan he benn, mes ne ket son eur c'horn-bout evel en doa clevet aliez en he venezion, son eun drompill eo a gleve. An taboulinou a gomansaz ive da grozal, ha pa zaljont da zellet en dro dezho, e voa goloet ar menez a zoudardet.

— Oh ! Soudardet bro-c'hall ! Soudardet a Frans ! eme Vertele. Emaomp saveteet ! Ar messaer bihan en doa anavezet soudardet he vro dioc'h ho bragueier ruz. Hag hen mar gouie da gaout ar vanden tosta dezho, hag he gamaradet var he lerc'h. Hoguen an ofiser a voa e penh ar vanden-ze, o velet pemp lakepot ho bizach e liou an douar, ho dillad louz, a billennou, ho c'hemeraz evit spierien ; (espionet). Hag e guirionez ho min ne lavare netra vad.

— Serjant, emezhan, croguit er hotred vad-ze, ha cassit hi d'ar Jeneral. Spierien int, ha pa o deus guellet ne allent ket tec'het, int deut ho unan d'hor c'haout. Ar Jeneral a gavo bremaic pep a vouchouer gouzoug da lacat d'ar ganfarted-ze.

Bertele gouscoude ne lente ket, hag a bede Doue en eur vont. Evel ne voa nemethan hag a vouesje ar galleg, eo hen ive a zalc'he ar goms.

— Petra, eme ar Jeneral, te zo goal c'hlas da veg da ober ar vicher divalo a rez. Credabl eo out bet desevet gant al lakepoted all-ze, ha setu aze eur chilgam o tont varlerc'h, ha me zo sur ma ve lezet da vont kuit ac'hann, hennez a ve guelet he zivesker ken eun ha divesker pephini.

— Jeneral, eme Vertele, ni ne domp ket spierien, petra bennag ma c'helfemp caout an ear da veza. N'hor barnit ket en han Doue ep hor silaou. Va lezel a reot da goms ?

— Ia, lavar din da guenta a beleac'h out.
— Euz ar Pyreece-huel, euz a barre, Sant Palatin.
— Laca evez ; mar leverez eur gaou deomp, eulhez gouzout petra zo oc'h da e hortoz.
— Biscoas n'em eus lavaret guetier.

Neuze unan euz an ofiserien a ioa en dro d'ar Jeneral, eur C'holonel coz, griz he vleo hag he varo, a dosteaz hag a lavaras :

— Mad, mar dout euz a Sant Palatin, lavar din hag hen a zo eno eun dra pe unan bennag hag a venit comz anezhan ?

— Ia, eme Vertele, eno ez euz eur Person hag a zo bet guisket evel doc'h, hag a zo eur groas var he vruched evel var hoc'h hini, ha gantha em eus great va lase.

— Guir eo, eme ar C'holonel Person Sant Palatin zo va mignon.

Ar Jeneral a ioa treng he vin bete neuze. Hoguen neuze o veza anavezet e lavare ar Messaer bihan ar vironnez, e teuas laouen, hag e voue leun a vadelez evit ar potrig. Rei a reaz urz dezhan da gonta kement a ioa digouezet gantha, ha Bertele a zistagaz he histor treaz ha distaguel. Comz a reaz ker mad evit ar pevar gamarad a oa oc'h he heul, ma en devoa gras evit ho. Eun nebent soudardet a voue carguet d'ho cilhas bete douar Frans eleac'h ma c'haljent gouad ho bouet gant honestis. Bertele a zonzje dezhan ez ea ive da veza casset da gaout he dud ; hoguen ar Jeneral a lavaras dezhan : « Chui, va buguel, oc'h eus speret hag oc'h euz rom da zeski petra eo ar bed, petra eo ar vuez. Chom a reot ganeomp-ni, hag ep dale o bezo desket beva. Hag o comz oc'h ar C'holonel coz : Colonel, me ro ar potrig-ma deoc'h ; kemerit soursi anezhan. »

(Eur pennad all ar zivree d'ezho)

Hano ar Zent evit ar Sizun-ma.

- DILLUN, 18 Du. — Dedi ilis Sant Per ha sant Paul, e Rom.
- DIMEURS, 19. — Santez Elizabeth, Intanvez.
- DIMERC'HER, 20. — Sant Bafiz Valda, gant ar c'hoar.
- DIZOUE, 21. — Ar Verc'hez Vari, casset d'an Templ.
- DIRGUENER, 22. — Santez Cecilia, guere'hez ha merzerez.
- DISSADORN, 23. — Sant Clemens, Pab ha merzer.
- DISSUL, 24. — Diveza sul goude Pantecost. Patronach ar Verc'hez Vari.

Abostol ar zivree.

Va breudeur, ne eanomp da bid evel doc'h, o e chom digant Doue ma c'hanavessot leun he yelontez to rendi ho speret ar skiant hag ar funez en deuz a zom evit kemer se ; Evit ma vevot en eun doare din a Zoue (pep guir) oc'h ober ho callout evit plijont dezhan pep tra, o touguen ar frouez euz a bep seurt oberou mad, hag o ch anaout Doue ato guell oc'h guell, o tont da veza leun a nerz, dre he c'hallout, evit he c'hloar ; o kenderc'hel da

c'houzaon laouen pep poan ; o trugarecat Doue ar tad da veza hon lakeat, dre he sclerijen, e stad da garet hon lod euz a heritach ar zaent.

Hen eo en deuz hon tennet euz a ziudan gallout an denvalijen, hag en deuz hon douguet e Rouantelez he Vap muia caret, dre e'hoad pehini omp bet prenet, hag on eus recevet ar pardon euz hor pec'hejou.

Lizer Sant Paul da gristenien Coloss. I. 9.

G. M.

KEMPER.

Beleien canton Banalec o deus savet pemp cant lur evit eur zouav a arme ar Pap.

Beleien canton Elliant o deus savet seis cant dec lur ha pevar ugent (790 l.) evit arme hon Tad Santel ar Pab.

E brozaoz, en oll ilizou, e rer ive pedennou evit hon Tad Santel ar Pap.

Guitalmese, 10 Du 1867.

AOTROU,

Carguet oun da gas deoc'h, evit soudardet hon Tad Santel ar Pab, ar som a 300 lur hag o pidi a ran da ober menek anezi er gazeten vrezonek, ervez ma eo merket aman varlerc'h :

Le Mestre, Person canton Guitalmese..	20 l. » c.
Le Toux, Person Landunvez.....	20 » »
Le Saout, Person Lambaol-Plouarzel...	40 » »
Le Roux, Person Porspoder.....	} 37 50
Buors, Vikel e Porspoder.....	
Abiann, Vikel e Guitalmese.....	15 » »
Le Bars, Vikel e Guitalmes.....	15 » »
Inienou eus parres Guitalmese (Assemb)	182 50

TOTAL..... 300 l. » c.

An oll veleien all eus ar c'hanton o deus casset kentoc'h o ofransou da leac'hehou all, mes en em gavout a rint er memez leac'h evit ar memez ezommou.

Breman e zeus eis mis var dro, beleien canton Guitalmese o doa casset ive 500 lur d'an Aotrou' Escop evit beva a guiska eur zoudard (zouave) da zifen stadou hon Tad Santel ar Pab, a sonj o deus d'en ober bep bloas, keit a ma vezo izom.

O saludi a ran gant ar brassa respët,

P. L B.

Cazetennoù escopti Sant Briecc so, evel re an escoptima, leun a listennou euz an ofransou roet da Vikel Jesus-Christ. Bez'em euz eul listen dirag va daoulagad hag a zao tost da bevar mil scoet.

Diblas a ra ato unan bennag a nevez euz an escopti evit mont da zifen an Tad Santel. Evelse, euz a Landiviziau eun den iaouane hanvet Lois Guillou, so en em ket en hent en derveziou diveza euz ar mis tremenet.

Al listen digor e ti an Aotrou De Kerangal evit izomou hon Tad Santel, a zao brema da unnek mil c'huec'h cant eul lur ha triugent. (11,661 lur.) — Ar pez zo savet dre ar Frans oll bete vrema a ia hirio en tu all da bemp cant mil scoet. (1,500,000 lur.)

An demezel de la Lande de Calan, e deus roet eis cant lur evit diner Sant Per.

Al liziri a scrif euz a Rom soudardet ar Pap, a so duiz, ar re-ze a ra e guirionez eun arme catolic.

Ne deont morse eleac'h ma zeuz eun danjer bennag nemet goude beza laket ho c'houstians e stad da vont dirag Doue. En eur vont gant an hent ema ar beden var ho muzellou, eur vech c'hoaz, dudiuze eo comz anezho.

Bez'ez euz, a leverer, hirio c'hoaz e Frans, tremen pemp cant den ganet dindan ren ar roue Lois pemzek ; da lavaret eo tud hag o deus vardro cant vloaz, rag ar re ze a voa deut oll var an douar araog ar bloas 1774.

Keraat atao a ra an ed, ervez *Cazeten ar Meziou*, Gouscoude e teu ed aleiz euz a du ar sao-heol da Varseil. Hoguen dre ma teuont, e vezont rinset, ha n'eus morse avoalc'h dioc'h an dud zo o c'houlouen. — Al loened, ervez ar memes cazeten, a ia mad varnezho e peb leac'h.

Eun nebeut christenien catolic euz a Vrozaoz o deus savet etrezho c'huec'h mil varnugent daou c'hant antercant lur (26,250 lur) evit cas armou da zoudardet ar Pap.

An amzer a zo caer evit hada ar c'halagoan, eme *Cazeten ar Meziou*. An douar so e doare vad. Esperout a eller eta e savo evel m'e dlet an ed a daoler brema en douar. Izom zo a guementse. Er bloa-ma e c'heller cridi ne vezo ket a zienez er vro ; hoguen ma na ve ket guelloc'h an eost er bloaz a zeu evit na deo bet er bloa-ma ha varlene, e teufe dienez ep mar.

Dioc'h ma lavar cazetennoù Marseil, e tigasser di euz ar broiou e tu ar sao heol, ed aleiz, ep niver. Er mor du e velet en dez all vardro daou c'hant lestr carguet a ed, ha daou ha cant euz al listri-ze a ioa o vont da Varseil. G. M.

PRIZ AN ED.

KEMPER. — 9 Du.		PONT-NABAT. — 7 Du.	
<i>Priz ar c'hant lur.</i>		<i>Priz ar c'hant lur.</i>	
Guinis....	46 lur, 24 c.	Guinis....	48 lur, 43 c.
Segal....	43 lur, 73 c.	Segal....	42 lur, 50 c.
Eiz.....	10 lur, 49 c.	Eiz.....	14 lur, 38 c.
Ed-du....	8 lur, 02 c.	Ed-du....	9 lur, 79 c.
Kerc'h....	8 lur, 83 c.	Kerc'h....	14 lur, 75 c.
Avalou-douar	5 lur, « c.	Avalou-douar	4 lur, 88 c.

Ar Gerant: AR. DE KERANGAL.

Kemper, moulet gand Ar. DE KERANGAL, Moulter an Escopti.

FEIZ HA BREIZ,

KELOU A BEP BRO, HA KENTELIOU VAR BEP TRA,

DIGASSET BEP SUL

Da guement Christen a goms ar brezounee.

Eun Abonnamant d'ar Gazeten a goust :

Evit eur bloas.....	DAOU SCOUET.
Evit c'huec'h miz.....	EUR SCOUET.
Evit tri miz.....	C'HUEC'H REAL.
Eur gazeten ebken.....	DAOU VENNEC.

Ar baamant a dle beza great araog caout ar gazeten.

ALLOU.

Ar scrijou a ve c'hoant da lacat en gazeten a dleer da adressi oll d'an Aotrou MORVAN, Beleg e Kemper.

Ar paeamanchou a dleer da adressi d'an Aotrou SALAN, ebken. An abonnamant a guemerer e ti an Aotrou SALAN, librer, ru Kereon, e Kemper.

KEMPER, 23 Du 1867.

Ar pez a zo difennet gant Doue a so difennet mad. An dud a feiz her goar, ha setu perag e chomont stard ha dinec'h e creiz ar goassa barrou amzer. An dud dizoue a guemer cals a boan hag a dreveil, a ra cals dispac'h ; hoguen an hini en deus lavaret da c'houagou ar mor : beteg ama e teuet, ha ne deot ket larcoc'h, a lavar dezho ive : ho counnar a deui beteg ama, mes ne dai ket pelloc'h, hag evel couagou ar mor ez eo red dezho ive chom a za dirag an termen-ze merket dezho gant dorn Doue.

Ar fur a lavare guechall ne voa netra a nevez dindan an heol ; hag ar pez a velomp hirio ne deo ket nevez ken nebeut, ne deo ato nemet ar virionez o stourm oc'h ar gaou hag oc'h he drec'hi. hag ar stourmad-ze a badokeit hag ar bed. Dalec'h mad eo bet gullet. Satan oc'h ober ar brezel da Zoue, ar bed oc'h ober ar brezel d'an iliz, ha bepret vikel Jesus-Christ a zalc'h mad, ha mar deo digouezet dezhan beza harluet, beza casset ha digasset ama hag ahont, bepret eo distroet da Rom ar gounit gantha. Vikel Jesus-Christ seul vui a gaz o deuz an dud difeiz outhan, seul vui ma reont ar brezel dezhan, seul vui a zispac'h a reont o clask he ziscar, seul vui ez eo caret hag henoret, seul vui e tom ar c'halonou outhan, seul vui e tro varzu enha calonou ar guir gristenien pere a ell beza avechou dizonch, mes ne zaleont morse da drei varzu ho zad pa velont en deuz izom anezho.

Etouez an dud difeiz e veler eun daolen all. Keit ha na zao den ebet en ho enep, e reont trouz, e reont dispac'h, e reont distruch zoken pa ellont. Hoguen mar da eun den caloneg bennag a ziarben dezho, setu ho oll fougerez hag ho oll brabanserez o coeza, setu ho oll gourach o vont da netra. Deg anezho ne ellont ket dont a benn euz a unan, ne gavont mui a nerz calon nemet evit tec'het, hag evit beza lijeroc'h, e lezont eno ho armou gant an nep a garo ho destum. Mar chomont eur vech ep beza trec'het ez eo pa zint ugent oc'h unan, ha c'hoas

ne aller ket lavaret e vije ar gounit gantha, eo guir Soudardet ar Pap ne eanont da stourm nemet pa n'o deus mui nag eur voulet hag eun tam poultre.

Ha petra da lavaret euz an dispac'h ar braz, euz an hini so e penn ar re all, euz eun den hag a so her brudet, pa her gueter o teo her brudet, o teo her gant ar c'henta, kerkent ha ma sab brez varnezhan, hag o tezel eno ar re a zo dindanha d'en em zaveter evel ma c'hoar, neuze da viana, a lavarot mui e thieruzia gant ar vez. — Oh ! an seurt tud-ze o deus tolet ho mez ket pell-ze. Pa en deus gallet en em zienez, pa en deus gallet mont eleac'h n'oa mui a zanter evithan, e sao adarre soum he benn hag e lavar : an dud digalon n'o deus ket c'hoar dont va lerc'h ! Evelse (viriziken ar re a dec'h eo an dud caloneg, hag ar re ho laca da dec'h eo an dud digalon ! Eur scrifagner a lavare en dez all o comz euz ar brezelecaer dispar-ze an den-ze, emezhan, a varvo our guiskat palastroù varnezhan.

Kement ma a ziskuez ato n'o deuz an dud difeiz a gourach nemet a enep Doue hag a enep ar re ne ellont ket en em zifen. Nebeut ayad e stourmer outho eleac'h begou ho bouton e tiskuezon ho zoulloù.

E Rom ervez ar c'helenien ez eus bet aoun epad eun nebeut derveziou. Serra a reat ar stalioù hag a d'oberion ha prenecher an teiz. Eur vech euzet an heol ne grade den mont er meaz euz he di-ha ne gullet dre ar ruion nemet trous treid ar bandennou soudardet carguet da zioal kear. Ne voa nemet soudardet ar Pap hag ar Pap he unan ha n'o devoa ket aoun. Soudardet ar Pap o devoa mall da staga d'an dispac'h nemet, hag ar Pap he unan a ioa ato laouen, ato tenna d'ar bras. He devoa Doue ne ket bet tromplet, hag an oll lavar ar brezounez o deus soudardet ar Pap trec'het ho enebourien, petra bennag ma voant cals bihanoc'h emiver evitho. Gullet int bet o tere'het mad oc'h an dispac'h nemet, oc'h ober distruch en ho zonez, ha ne voant nemet unan o h ugent ! Pa stourmer evit Doue hag evit ar virionez an

den so gwest d'ober burzudou.

Etouez ar zouavet o deus collet ho buez er stourmad... deus bet a enep an dispac'herien, e comzer euz a eur ruez, eun den iaouank a zaou vloas varnuguent a ioa deut varlene d'en em lacat e servich ar Pap. Evit ar vech kenta edo var dachen ar vrezel, ha discaret en doa meur a enebour pa voue discaret he unan, goullet e pemp pe c'huec'h leac'h. Receo a ellaz he zacramanchou araog mervel, hag ar beleg a voue var he dro a gomz evelen euz he varo: « Rei a ris dezhan he oll zacramanchou, hag hen a ioa cagnet a laouenidiguez. Eur breur iaouank dezhan a so ive en hon touez; he velet en deuz araog mervel. Vardro peder heur dioc'h ar pardaez her c'havis calz falloc'h; he nerz a iea digantha, hag e voa nec'het o clask gouzout petra voa guella dezhan da ober, pe ober he c'hallout evit chom beo hirroc'h, pe en em lezel da vervel evel ma plisje gant Doue. Aliez e lavare: « Va Jesus! o va Jesus! me a guinig deoc'h va buez evit an iliz a Rom, evit ar Pap, evit va c'herent. Jesus! Mari! Joseph! Va zad, lavarit d'am c'herent ho c'haran a greis va c'halon, va zad, va mam, va breur, va c'hoarezet. » Evelse eo e rentaz he huanad diveza.

N'en doa great nemet mervel pa zigouezaz he vreur. Hema a bocas dezhan hag a scuillaz d'elou puill. Clasc a riz he gonsoli, hag an den iaouanc a lavaraz din: Mont a rancan da ober va dever; laket oun da zioval doriou kear, hag eo red din mont eleac'h m'eus gourc'hemennet din. » Hag hen ac'hano daoust d'an oll garantez en doa evit he vreur. Antronoz e velen ar memes den iaouank o ranna he vara gant dispac'herien great prizonierien, gant ar re o doa lazet he vreur an derc'hent. — It da glasc skueriou evelse er meaz euz ar guir iliz, etouez tud ha m'o deus ket a relijion! Ar feiz epken so gwest da zével an den ken huel-ze.

Soudardet ar Pap, epad an abadennou so bet a voa pevar beleg oc'h ho heul. Ar pevar beleg a ioa var varc'h e creiz an arme, ha pephini anezho, d'he dro, a zougue ar sacramant santel. Ar zoudardet-ze a elle lavaret eta e guirionez: Doue so ganeomp! Ia, Doue a ioa gantho; hel lavaret hag her gouzout a reant, hag hen diskuez o deus great.

Abaoue an amzer-ze ma zea ar gristenien euz ar vro-ma d'an douar santel da vrezeleaat evit bez hon Zalver, m'eus gulet netra ker caer. Araog stourmad Nerola, an oll zoudardet a dremene dirag eun tad a urs sant Dominic a voa gantho, hag en eur vont ebio, e pokent oll d'he crucifi. An tad-ze a voa gantho ive oc'h ober eun nosvez bale, ha pa o deveze distaguet historiou ha canet eur zon bennag, an tad a lavare: Lavaromp ar chapeled brema; ha dioc'htu, eur rum o lavaret hag eur rum all o respont, e lavarent ar chapeled evel pa vijent bet eur vanden menec'h en eur gouent. G. M.

BUEZ SANT VISANT FERRIER.

(TRIZEVED PENNAD).

Visant na dremene ket he amzer o rei missionnou

ebken: caout a rea eur blijadur ar vrassa oc'h ober Catekiz d'ar vugaligou divar ar meaz; rag, emez-han, ne dleer ket sounjal e vesse netra izel e touez an holl draou a zo stag euz carg eur beleg. Gouzout a rea peguen caer eo dirag daoulagad an Aotrou Doue, kement a ro gloar da Jesus hag a zo talvoudeg evit silvidiguez an eneou. Eun dudi voa hen gouelet, mareou vije var an deiz, o tastum en dro d'ez-han bugaligou, hag o teski d'ez-ho ho Fater, ho C'hredo, ho C'honfiteor hag ho holl pedennou all. Deski a rea ive d'ez-ho caret Doue dreist pep tra, enori ho zud hag heuil ho gourc'hemennou. Evel gouech-all an abostol Sant Paul, Visant a zigouere eb kem na dishevelidiguez ebed, ar paour hag ar pinvidig, an den reuzeudic hag an noblans. Laouen en em ziscoueze dirazho holl, ha dre n'hent-ze, e cave an tu da c'hounit ho c'halonou, ha da ober d'ez-ho ar brassa vad. An intanvezed hag an emzivadad a gave en-han eun alvocad ar galloudussa; en eur guir, ober a rea d'an holl, kement vad ac'helle d'a ober. Doue a roaz d'ez-han etre m'edo e Breiz, ar galloud d'ober calz burzudou: n'euz fors e pez corn euz ar vro en em gave, an holl, eb gouzout he iez pe he langach, a ouie mad ar pez a lavare, pa vije o prezeg pe oc'h ober Catekiz. En divez, he gorf a rancaz plega dindan ar iuniou hag ar skuider euz he labourou abostolig.

He guenvreudeur, o velet he varo o tostât, a reaz ho goualc'h, evid hen douguen da vont da vervel e Spagn. O velet er vad ar c'hoant ho doa ez aje da vervel d'he vro, Visant ne lavaraz ket nan; mez en em lacat a ra da bedi evid anaout bolontez Doue var guement ze; ha goude eun nebeud dervechon, e teu da lavaret kenavezo da dud Gouened: ha goude, d'an heur a anter-noz, e sav var eun azen evit kemer penn he veach. Mez goude beza haleet epad eun heur benag assamz gand he guenvreudeur, ez-eo sebezet maro pa deu an deiz da darza, oc'h en em gaout e kichen dor-kear. Neuze e tistro euz he guenvreudeur hag e lavar d'ez-ho: « Deomp er gear-man, « va mignoned, rag ar pez a zo erruet gan-e-omp, a « ziskuez selear, eo aman e tlean, achevi va buez. » Ar c'healou euz he zistro a reaz kement a levenez e kear, m'a-z-eaz an holl, goazed, merc'hed ha bugale, d'ar red evid hen gouelet ha pocât d'he zaouarn: ar c'hleier a voue laket da guellaza evel deiz eur gouel braz; hag a hep tu ne glevet nemed ar c'homzou-man: « Benniguet « ra vezo an hini a deu en hano Doue! » P'edo erruet e kichen dor an hospital e leac'h ma tiskenne peur liessa, e lavar d'ar bobl ar c'homzou-man: « Va bugale, plijet « eo da Zoue e tistrojen aman; n'eo ket evit prezeg e « tistroan cousgoude, mez evit mervel en ho creiz. No « peuz breman nemed en em denna kuit, ha, ra ma « skuillo Doue varn'oc'h he vennoz evid an enor hag « an digoumer mad oc'h euz great d'in hirio. »

Goude e lavaraz eur gomz all benag d'ez-ho hag a la-keaz ho d'elou kement da redez, ma voue buan troet ho levenez e caon hag e melconi. Antronoz e voue scoet gand eur derjen ken yud, m'a teuz he holl izili da veza sonnet; cousgoude dre m'a chomme hepred gant-han

he spered-vad, e teu da c'hervel he guenvreudeur, ha da ziscleria d'ez-ho an deiz euz he varo. Ober a ra dont de gaout he confessor, ha goude beza diskuillet d'ez-han kement a rea diez d'he goustians, e c'houlen digant-han an absolven euz a bec'hejou he holl vuez, ervez ar gal-loud en doa bet evit-ze digant ar Pab Martin V. Reseo a eure goude he sacramanchou all, hag e tremen c'hoaz tri deiz evit douguen dre he gomzou d'ar vertuz kement hini en doa an eur-vad da dostât out-han. Ar brud o veza eat dre gear en doa Visant resevet he sacramanchou diveza, an Aotroun'Escop, an noblans hag ar bobl, a redaz da di ar c'hlanvour: ar zant a lavaraz neuze d'ez-ho: « Aotrounez a Vreiz-Izel, m'ar taolit evez er pez am euz. « prezeguet d'e-hoc'h epad daon vloaz, e velfet ervad « n'em euz lavaret netra ne ve talvoudeg evid ho silvi- « diguez. Ervez m'o peuz hen gouelet, great am euz « brezel d'ar goal-siou a ren en ho touez: hoguen tru- « garecât gan-hen an Aotrou Doue, dre m'am euz cavet « an tu dre va c'homzou da bicat ho calonou en eur « ziskuez d'e-hoc'h an hent a gas d'an Env. N'o peuz « breman nemed kenderhel en hent-mad-ze, ha derhel « hepred sonj er pez am euz desket d'e-hoc'h. Evidome, « pa blij da Zoue e tenffe aman ar maro d'ham skei, a « c'houërant d'e-hoc'h e vezin en Env eun alvocad braz « evidoc'h. Dale'hit eta hepred, tud nerzuz a Vreiz-Izel, « dale'hit skrivet en ho calonou comzou ar paour keaz « missionner a velit aman astennet var eur goele a boan, « ha neuze, pa deni ho tro da zilezel ar bed-man, e « caffet a dra-sur trugarez dirag daoulagad ho parner. « Va nerz a deu d'ham dilezel; va mouez a deu da sem- « plaat; kenavezo eta, va bugale... Ar maro a dle va « samma abenn dec devez aman... Eur vech c'hoaz « kenavezo. »

BODEUR.

(Eur pennad-all divezatoc'h).

BREMA HA GUECHALL.

Oh! evit an dro-ma, kenta tra a ran eo sevel em za, lakaad va-zok em dorn, ha stoui va c'horf betek an douar gant ar brassa respet... Ia, ia..., red eo hen anzaou, hag hen anzaou a ran ivez a leiz va ginou, evel eur Breton euz an orin goz ne glask ket, ne oar ket liva-geier, var ar gont-ma an amzer guechall a goll a galz. a galz; gant an amzer a hirio... Ar pez a reat guechall n'eo netra e kever ar pez a reat hirio a beptu, e kear ha var ar meaz...

Petra fell eta da Lan An Dall da lavared, ma kaoz evel ma ra, ma z a tost da vad a enep kement en d'euz skrivet abaoue ma sklabez paper evit Feiz ha Breiz?... Petra fell dezhan da lavared, va zud? Mez n'oc'h-hu ket estonet e ve bet chommet keit-all hep he lavared? Ah! kredit ervad, mar en d'euz Lan An Dall, ar c'heaz koz, al labourer paour, an den a boan, savet he vouez evit abegi ha kondaoni ar c'hoariou hag ar c'hase, evel m'en d'euz great, ne ket ma ve bet biskoaz nag ar c'hase; na kalz a c'hoariou traou fall anezo ho unar dirak he zaou-

lagad. Nan, nan..., mez boaz Lan An Dall eo he c'hoari amzer, abaoue m'en d'euz sonj, sellad da beleac brez ear gant peb guenoien, petra zeu an dud da veza oc'h heul eun darn dechou, hag a bell zo e vel gant glac ha siouaz! e teuer, a forz da ober eun darn c'hoariou da eva, da lonka kafe en hostalirio, e teuer stank ha tear da eva, da lonka ar pez a c'halvet guechall chigoden, guin ardent, hag a c'halver brema, ne ouzon me evit petra, pe ne fell ket d'in he lavared, a hanver brema bete, bete... Bete, va Doue! eun hano drol, ne kuir... eun hano n'eo ket Brezonek a dra sur... eur bastard a hano a rank beza deuet a eur c'horn benak e Broc'hall, hag a zo anavezet hirio e peb parrez euz hor Breiz.

Ia, a forz da c'hoari, da lapad kafe, e teuer, klevit da lapad bete abred, a leiz ar ginou, ma vez re hent avechou ar gonnailen evit he dreiza, ha re just ar c'hoari evit he loja ken er bouzellou bihan, ken er bouzellou braz. Bugaleou, en hor bro, en em ro brema da c'hoari kement ha kement all, d'an oad a zaouzek, tizek, pe varzek vloaz... da c'hoari c'hantou, da c'hoari chailhout, da c'hoari domino, eur c'hoari latin, me gred... da c'hoari ne ouzon petra, da c'hoari ar riboul... Klevit eta na pe seurt c'hoari... lavarit d'in hag en amzer guechall euz bet biskoaz menek a eun hevelep c'hoari. C'hoari a rear dreist oll da zull, da c'honel, da zeiz foar... C'hoari a rear er bouk, var ar roue e kear, tostik d'an hostaliri, manteze zoken en hostaliri, gant aon, na petra' ta, rak ar glao, rak an domder... N'eo ket eur marvail e ve c'hoariet e mare an oferen bred, ar gousperou... An Aotrou Doue a zo brema, a zeu da veza brema a zeiz da zeiz, eun Aotrou-kear bihan, ken dister, memez evit eun darn vugale... An Aotrou Doue a zo en hon amzer eun dra ker koz, eur pez ker kosedet, ker prevedet, ne dalv mui netra, a dalv da hirra eun dudaden!... C'hoari a rear euz ar mutin d'an noz, kement ma c'houezer, m'en em skuizer, m'en em gaver iitket, ma ranker eva eur banne... Oh! ne ket lez eo a c'houlenner en eun hostaliri, kredit ac'hano, ne ket evit kaoud dour sklear eo e kerzer d'an hostaliri, gouezit-hen ervad... Nan, nan... traou kre, traou da garza ar c'houzoug, da zevi ar bouzellou, eo a ra brema, aller ar voused, aller hor mec hiejen, hor ginnagion... Eva a rear eur banne, daou tri vange, euz c'hoari adarre... eva a nevez... distret d'ar c'hoari, hevelep e tremener brema ar zull, ar gouelio... Euz ar ker bras, ken druz, ma koller ar penn, bouzo mui bele eun, ma kouezer, ma chommet var an hent, e kreiz an fank, daou, tri en eur gichen, ken oc'h, ken evel mec, ma kousker, ma roc her var an hent, euz ar park, distro, e korn ar vered... Ma na gaver guell, ma na ranker mond da ober trouz, mond da ionc hal en euz, evel c'hoaz moc'h a ia kontel ar c'higer en ho gouzoug... Eva a rear eur zulvez, diou zulvez, teu zulvez... eva a rear da varc had, da foar, en eur banne eured... deski a rear, en em voaza a rear mui-oc'h-mui, ghep oc'h-guell, da eva, ker kouiz, ma ranker eva dalc mad, dioc'h tro hag a enep tro, n'heller mui beva hep

eva, ma teuer da veza mesvier reud araok beza anter den, da c'houezek, seitek vloaz, ma roer an dorn d'ar vesventi, an plac'h fall e d'euz nousped ar goaz, hag a c'houenn bepred goazed, ma'z or lonker, rouller, kail-len, truillen, anduillen, libourc'hen, abarz kaoud an oad a zoudard... hag ama dibaot e vez an ozac'h a-ra an dilez, euz he c'hreg... eur veach dimezet, e maor dimezet, mad... an ankou hepken peurvuia eo a hell ober an disparti.

E peb amzer, evit guir, euz bet mesvierien var an douar, dreist oll en hor Breiz, e mesk ar Vretoned, dioc'h ar gont a red er bed. Abaoue an dro genta ma oue tizet guechall, ha darc'hoet mort, ha taolet var he gein hon tad koz Noe hag hen o kaoud oc'hpenn pemp kant vloaz var he hano, abaoue an dour diluj a veuzaz guechall kement a dud hag a chatal, orin ar vesvierien a zo bet e peb mare eun orin anavezet hag e kear, ha var ar meaz, Eyclato, Lan an Dall a gred stard, euz a gern he benn bete seuliou he dreid, n'euz bet morse, da vihana en hor Breiz, kement a roullerien evel a zo abaoue eun nebeut bloaveziou, abaoue eun tregont vloaz pe var an dro. Nan, nan... amzer ebet guechall n'eo bet par d'an hini zo brema; en amzer ebed n'euz bet guelet kement a lonkerien, kement a druillou divalo, flieriuz, kement a dreizerien bete!... hag e ve red brema lakaad trizek da ober douzen, evel e marc'had ar viou, n'euz parrez en hor beg douar na ve kavet enhi n'ousped an douzen mesvierien, mesvierien oll troet oc'h ar bete, oll douget d'ar bete, oll sot gant ar bete, en tu all da eur goujard gant he c'houjardez... N'euz hano ebed mui d'en em vesvi gant guin hepken, ne zisionker mui nemet bete, koz traou melen, goestl da gontammi, da laza tousigi.

O va mignon, Laouik an Dero, ne ket hep abeg hoc'h euz lavaret, c'houi, en ho son, pe en ho kantik Mesventi dizaour, a grog druz er Vretoned, hag a goust d'ar vignoned oc'hpenn arc'hant hag aour! Pa vedomp-ni guechall o sevel, a bep ar mare, ia, a daluadou hir, ni a vele en hor bro eun nebeudik goazed, milierien, portezerien, mansonerien..., oc'h herella var ho zreid, oc'h asoupi var ho hent, o kerzed a visiez, o tougna ho fri oc'h ar guéz, o tirska ho zal oc'h ar mogeriou... Eun dro benak zoken hon euz bet kavet lan an ti all, Fanch al leur goz a stok ho c'horf e kichen poulladou dour... An daou voumoun-ze, a ouzoc'h ervad, a ioa anavezet gant oll dud hor parrez, n'oant ket hevel oc'h an dud all en hor parrez! Unan anezho ivez, ar c'heaz! a zo bet mahvet en d'ar c'hreiz ar goanv..., egile, skoet gant eun taot goad, a zo bet ead d'ar bed all hep kaoud sikour na digant belek, na digant kloarek... Mez mesvierien neuze evel ma zeuz brema, mesvierien ker stank, ker puill, mesvierien ker jaouank, mesvierien a vez atao ar c'har gantho araok ar c'hezek, oh! nan, nan, n'oa ket, n'oa ket... Brema, Laouik paour, guelit eta, klas-kit e pe di n'euz ket a roullerien, daou, tri e leac'h unan; an tad a ev, ar mab a ev, ar mevel a ev, ar micherour a ev... N'euz brema mansoner, breser pri, kemener, bro-

cher laou, kakouz, debret gant an astuz..., n'euz treven-, n'euz treusteuliok, n'euz mevel tort, gravazok, luch, born na oar lonka, na gar lapad bete, ma rank storlokad, karnachad muia ma hell oc'h heul he zenklennadou!

Evelse ive, va c'hamarad koz, evesait peger stanke teu da veza an hostaliriu en hon touez! Gouzoud a rit, koulz ha me, hirio an deiz, pa c'hoanta lost bourc'hiz dont da veza pinvidik e berr amzer, en em c'lira marc'hadour guin, me lavar marc'hadour bete. Hirio an deiz, pa vez skuiz Dom Joz o labourad var ar meaz, pa gav tra boaniuz ha divalo tenna louzou euz an douar, kaoud pri, teil oc'h he zeuliou, oc'h he vragou; pa zeu ar bara du da veza tra dizaour evit he staon, he c'hinou... Dom Joz a ia e kear... Dom Joz a ia da zerc'hel hostaliri. Dom Joz en em laka da garga ha da ziskarga boutaillou, micher vrao evit eur geuz!... Dom Joz a goll an amzer ec'hiz eun Aotrou hag hep dale a zebr haraguenn, a zao arc'hant en he c'hodel, a bren leve, ne oar mui nemet gallegad, hag ober goab euz al labourerien, selled oc'h kouer divar beg he skoaz. Piou eta a zo o vaga ker brao an Aotrouien-ze euz ar c'hiz nevez, a zeu, euz an dervez d'egile, da veza mistri ar bed, a c'hoantaio hep dale lezel var ho lerc'h kement den honest a zo c'hoaz en hor parrezion, kentelia betek hor beleien, hor pastored? Piou..., nemet eun toullad tud sot divar ar meaz, eun toullad everien, a gav guell teuzi en hostaliri ho gounidegez, ho arc'hant, ho leveou, ho chatal, ho ziegesiou seac'h ha glaz, eget en em viska ho unan, eget maga ho gragez hag ho bugale, eget paea ho mistri, hag espenn evit mare an dienez, evit amzer ar gosni? An dud divar ar meaz eo a zo brema, gant ar re genta, gant ar re voasa, o stlapa kement mad ho d'euz en hostaliriu evit larda traou dibreder, traou didalvez, hag a gemer, a heuill hent ar baourentez, pa hellent en em zével ha lakaad a gostez. Dre-ze nag a hostaliriu e kear, ha var ar meaz, siouaz! Petra veler e kear en hon amzer? Bod hilié tost da vad oc'h peb ti... prest ne vezo mui nemet hostisien en hor c'heriou! Ar memez tra a c'hoarvez en hor bourkou. En hor parrez-ni guechall, paour keaz Laouik, n'oa nemet eun hostaliri, unan hep ken... eur varriken guin ruz, eun anter harriken guin guenn, hag euz a dregont da zaou-ugent boutaillad hini melen, araok ar pardon, evit ober ar bloaz, ar bloaz penn da benn, honnez oa an affer. Pet hostaliri a zo brema en hor parrez, va c'hamarad? seiz er bourk, ha teir var ar barrez!... dek er barrez... Guillou an hostis guechall, ma na vije bet labourer c'hoantek, a vije bet eat da glask he voued. Dek hostis a vez brao hirio, a zebr bara guiniz hag a ew chigoden hep arvez, el leac'h guechall n'helle ket eun hostis kaoud bara groz da garga he gov. Chenchet euz eta penn d'an vaz, va c'heaz Laouik! Allaz ia... eno ive guechall ne vije trouz, abaden na da zul, na da c'houel... eno ez eat aketus d'an oferen, d'ar gousperou... eno e salaouet, evel a ouzoc'h, hor pastor koz, e sentet oc'h an tad kenta goude Doue, oc'h an Aotrou Person... Brema Laouik paour, eno

ee'h ouzor muioc'h a c'hallek, guir eo... ne zouger mui na bragou braz, na bleo hir... eno ez euz brema pennou touz, divesker treud... Mez ive nag a diez eno a vez goullo brema; anter c'houllo da vihana bete pell en noz da zul, da zeiz foar... nag a drouz, nag a freuz el leac'h m'en em c'hreat ker brao guechall... nag a vugale vihan a vez stoket ha distoket, a vez tennet euz ho gueleou gant tadou feulzet, a glev kant mil gueach muioc'h a zakreou, a nondeou, a zoubleou, a vallosiou, eget na vez lakeat a dammou bara en ho dorn... nag a c'hragez a vez lezet eno da c'hlaouri gant an naon, a vez divisket

CANTIK AN ILIZ.

VAR TON : *Omni Die*, pe *S. Casimir.*

Pa rer hirie
D'Iliz Doue,
An dismeganz ar vrasa ;
Deut, pobl fidel,
A voez huel,
Deut d'he meuli n'eur gana :

Diskan.

O Mam dener,
A zisprizer!
Me a vezo d'eoc'h bepred ;
Bet ma zouten,
Ma sklerijen,
Bezit gant ann oll karet.

Nan, birviken,
Nep falz kreden
Euz ho fe-niam distago
Kent a sklaso
Ma muzello
Mitan ankduain ho komz!
Ho kurunen
Dre ar voullien
A zo stilet gant kounar :
Doue ruz
C'hoaz ma luc'ho
Ha ni a gano d'ho kloar

AR MESSAER BERTELE.

BISWET A PENNAD.

Bertele ne voue ket gda laouen o clevet hen dalc'het e touez soudardet Frans, guell a vije bet gantha mont ive d'he vro gant he gamaradot. Hogueu ar jeneral en doa comzet ha n'oa ket da lavaret nan. Eur mul a voue roet dezhan evit mont da heul ar c'holonel he vestr nevez. Ar c'holonel Carnac a reat euz a vestr nevez Bertele. Eun den seac'h e voa. Diou gleizen a ioa a groas var he wizach ar peza roe dezhan eur goal ear. Pa veze gant

a nebedou, a vez guerzet d'an hostisien betek an eured, a vez roet evel e prov d'an hostisien betek an toaz aia da ober bara en ti forn evit ho bugadou a zizec'h gant an dienez, betek an trebez a zale n'batatezenou da boaza var an tan, evit ober pred da bemp pe seiz korvadry a lamh en d'ar d'ho mammou, hag a grievid kaoud ho c'hoan, eat ma zeo bet ho benn abiou dezo! Ah! honnez eo c'hoaz ar c'hiz zo brema, hag a stanka muioc'h-mui bep deiz! Ah! n'oa ket ar c'hiz guechall; Doue ra vezo moulet! LAN AN DALL.
(Eur pennad all eur vech all)

An dienez,	Pii Nao ho ren,
Ar marv memez	Ha war he bennad
N'oufent ket ho spouroni ;	E toug eur gurunen sporn
Mui me esper ;	Mes hen ive
Pa lavarer	Vel Mab Doue
E tosta ho c'hangoni.	Gant hi trec'ho an feth
Pa ve ar mor	Doue varno,
Leun a fulor,	A gastizo
Ho pak ve ket diskaret.	Eun de ho c'nebeourien ;
Neb a grede	Vit ho tierza,
Toulla ho pe	Vit ho skoazia,
Zo marv, ha c'houi zo chommet.	Ganeoc'h a vo da viken.
War ar roc'hel,	Varz an env,
Iliz santel,	Gant eur fe grenv,
C'houi a zo diazeet ;	Gant hanz, savit ho moez
Kement hini	Doue, zo c'hoaz
A stok out-hi	He c'halloud braz,
Hi a vezo bruzunet.	C'hoaz eo braz he vadelez
Disseria	Euz a Jezuz
A ra pep tra ;	Ar vrec'h nerzuz
Pep tra er bed a dremenno	Hep dale ho tifenn.
Evid oc'h, c'houi,	Ho pugale,
Gant ar gozni	Gant joa neuze,
E flamma ho stereden.	Choaz krenvoc'h deoc'h a gano.
Pa c'houez ar bar	Na mar tlefen
Vit ho tiskar,	Beza biken
Na ra nemet ho sevel ;	Traou deoc'h Iliz santel
Doue'n eun tu	Groit d'in neuze
Zo ganeoc'h hu.	O ma Doue
Gwaz d'an neb rai deoc'h brezell	Groit din me kentoc'h mervel!

he zoudardet, he vouez a ioa frank ha gata, he vicher a ioa grons, ha n'oa ket brao lavaret na dezhan barreze, avad en he di he unap oa sioul hag he gavad evel eun oan, dizroug evel eur bugel lent evel eur plac hag, idexot evel eur c'hloareg jaouank. Ar messaer bihan pihim wor serviche en he dro a ioa eta en he blijadur. Ar c'holonel a gant zes dezhan euz a berson Sant Palatin, ha neuze he score di var benn cals traou hag ar voue talvoudek dezhan divezatoc'h. Evelse ive Bertele a lavaret goudeze ed eno en doa debret he vara guiniz, euz a d'ar d'ho mamou, hag a grievid kaoud ho c'hoan, eat ma zeo bet ho benn abiou dezo! Ah! honnez eo c'hoaz ar c'hiz zo brema, hag a stanka muioc'h-mui bep deiz! Ah! n'oa ket ar c'hiz guechall; Doue ra vezo moulet! LAN AN DALL.
(Eur pennad all eur vech all)

Fransizien a enep ar spagnolet, Bertele a heuille he vestr var dachen ar vrezel; clevet a ra eur voulet o vont en eur sotal ebioù d'he ziouscouarn, hag o skei ar c'holonel e costez he benn. Coeza a reas d'an douar en eur lavaret: « Jesus ! va Doue ! ho pet truez ouzin ! » Bertele a ziskennaz ive buhan da zonzal he zével; hoguen epad ma edo crog enha a dro vriad, e voue tizet he unan gant eun tenn, hag e coezaz a stog he gorf collét he anaoudeguez gantha.

Pa deuaz enha he unan, edo var eur guele en eun hospital, hag eur c'hoar, (eur *sœur*) oc'h entent outhan. Kerkent ha ma c'hellas comz, e c'houlennas kelou euz he vestr, hag e clevaz oa maro var an dachen. Hoguen maro oa evel eur guir gristen ma zoa, great gantha he bourchas. En he c'hodel oa cavet eur chapeled hag eur groaz, hag enn tam paper var behini en doa merket ar c'homzou-ma, evel pa en divije gouezet araog e l'ie beza lazet en deiz-ze :

« Mar marvan hirio, e fell din e ve roet d'am zervicher Bertele ar chapeled hag ar groas-ma a zo ganhen ugent vloas zo. » Ar *sœur* a roaz, en eur vouela, d'ar messaer bihan, ar groaz hag ar chapeled, hag hen a vouele ive o kemeret an heritach-ze a leze gantha he vestr mad.

Bertele a voue eur mis clan. Kerkent ha ma voue pare, e scrifas d'he vam, rag n'en doa ket bet euz he c'helou abaoue m'en doa he c'houiteat. Siouas ! he vam a ioa maro, hag unan euz ar re en doa tennet a dre daouarn al laeron eo a ziscrifas dezhan. N'em eus ket izom da lavaret e voue glac'haret braz o receo ar c'helouze. A hent all e lavaret dezhan e voa he gamaradet deut da veza tud honest hag en em roent d'al labour. He vreur hag he c'hoarezet a ioa ive oll laket e tro da gaout ho bara dizoursi. Kementse a viraz outhan da vont ractal d'he garter, hag en em lakeaz e servich ar medesin en doa he louzaouet.

Ar pez a reas d'ar messaer bihan mont da zervicha ar medesin-ze, eo ma en devoa anavezet guechall e Sant Palatin eur medesin pe eul louzaouer hag a voa caret gant an oll, dre ma vouie lacat an oll d'he garet. An den-ze a ioa eur c'hristen mad, hag en eur guemeret soursi euz ar c'horf, ne ancounac'he ket an ene. Meur a hini a lakea da zistrei oc'h Doue pa veze galvet var ho zro. Ober a rea dezho lacat urz en ho aferiou, distol ar madou deut gant an hent fall, en em unani pa vezent e dizunvaniez gant unan bennag, en eur guer, meur a hini a lakea evelse e stad da vont dirag Doue, ha kemeret e c'halje beza evit eur missioner pe eun abostol. Evelse ive an oll her c'harie, a zente outhan cals kentoc'h evit n'o divije great oc'h eur beleg, dre ma c'hanaient he lealdet, ha ma c'houient ne glaske nemet ho mad.

Ar medesin ma en em lakea Bertele en he zervich a reat anezhan Dom Pedro. Mes n'oa henvel tam ebet oc'h ar medesin mad a Sant Palatin. Dom Pedro ne vele en den nemet ar c'horf; evit Doue ne zonzje ket calz enhan, hag an ene ne vouie nemet pe a voa anezhi pe na voa ket. Eun den gouezieg oa gouscoude, ha fizians o doa an dud enha abalamour d'he vouezieguez. Eun den mad

oa ive, ha rei a rea gant larguentez d'ar heorien.

Doue en doa great eur c'hras vras, d'ar medesin-ze o rei dezhan eur verc'h, hanvet Izabel, hag a ioa devot evel eun xel. Evel n'en doa ken buguel nemethi, he c'harie dreist penn, hag he leze da ober ar pez a garie. Izabel a rea ive kement a alle evit plijout d'he zad, ha ne eane da bidi evithan, da c'houlenn ous Doue ar c'hras da velet he zad o tistrei outhan. Savetei ene he zad, setu ar pez a rea he oll nec'hamant. Doue a roas dezhi he goulenn.

Dom Pedro a voa eun dervez o sonjal mont en hent pa voue scoet gant eun taol goad. Chom a reaz eur pennadik mad ep caout he anaoudeguez. Izabel a vouele hag a bede. Guelet a rea he zad o vont da vervel ep beza great netra evit he ene. Dont a reas gouscoude, he anaoudeguez dezhan ha kenta a reaz e voue goulenn eur beleg. Receo a reaz he zacramanchou, hag evel ma en doa roet goal skuer o chom ep heuille he relijion, e falvezas-dezhan e vije galvet an oll amezien evit ho renta testou euz he zistro oc'h Doue. Prest goude, e varvaz en eur drugarecat he zalver hag he verc'h Izabel da behini, goude Doue, e voa dleour euz ar c'hras en doa bet da zonzal en he ene araog mont dirag he varner. Setu pebez nerz o deus dirag Doue pedennou bugale vad a gar ho zud evel m'eo dlet.

Izabel, evit diskuez da Zoue he anaoudeguez vad, a guiteaz he madou braz hag en em dennaz en eur gouent evit en em rei oll da Zoue ha d'an oberou a garantez.

Bertele en devoe evit trede mestr eur marc'hadour braz euz a gueur, hanvet Miraflores. N'oa ket er c'harter oll eun all ker pinvidig hag hen, mes ive n'oa ket eun all ken ingravet hag hen, ker stag he galon oc'h an arc'hant. Ne vouie ket niver he zanvez, hag en doa aoun o tibri bara. Cridi a ellet e voa euz a vouenn an tousseg en deuz aoun na vanc'e douar dezhan da zibri. He avarislet eo a reas dezhan kemeret Bertele en he di.

Miraflores a ioa bet clan eun nebeut diaraog, ha pa voa guelleat dezhan, e voue tost dezhan mervel pe da viana coeza en eur c'hlenvet cals goassoc'h evit an hini ma save anezhan, o velet peguement a labouset guenn ha meleu a voa red dezhan da rei evit ar medesin hag he louzeier. Hoguen pa voue meneg d'ar messaer bihan da vont en he zervich, e lavare evelen outhan he unan: « Ar potrig-ze en deus doare da gaout speret, da veza eur buguel eveziant. Gant eur medesin gouezieg edo, hag ep mar en devezo desket louzaoui tud clan, ep mar e c'hoar pe seurt louzou so red da gaout oc'h meur a glenvet, hag evelse mar chomfen clan, me pe unan bennag euz a dud va zi, hennez a vouezo ho louzaoui ha ne gousto netra din. »

Miraflores en doa clevet c'hoaz e voa bet Bertele o sicour ober ar gueguin e castel al laeron, hag en doa sonch d'he lacat da ober avechou ar memes micher en he di.

Setu eta Bertele lakeat da vevet a gambr, da gueguiner, ha pa vije izom, da louzaouer. Hoguen, evit ar

vicher diveza-ma, an nebeut labour en divije oa ar guella cals gant he vestr. Rag lavaret a rea ne d'ie ket eun den beza o clase louzou kerkent ha m'en divije poan en he vez bihan, hag evithan he unan en doa tizet e varfje kentoc'h evit na roje eur vech all kement all da eul louzaouer.

Setu ama eun dra digouezet epad ma edo Bertele en ti-ze hag a ziskuez selear pebez den oa Miraflores. En ti-ze oa cals staliou hag ive aleiz a zervicherien. Evel ma zoa eun ti pinvidik, oa red mad ive he zerc'hel evel ma tale her an traou en tiez pinvidik. Hoguen er goan oa red caout tan er staliou, dreist oll pa deue an noz. Eur mevel a ioa carguet da zigas keuneud en eur c'horn euz an ti, hag ar zervicherien a guemere ac'hano pep hini ar pez en doa izom en he stal. Ar mevel a zigase peurvuia bevech peadra evit tri pe bevar dervez. Hoguen pa veze digaset keuneud d'ar c'horn tro-ze gant ar mevel, Miraflores a zave en noz varlerc'h pa gave dezhan e veze cousket an oll, hag a gasse briajou keuneud ac'hano d'ar c'hardi, o sonjal e rajent er memes tra, tri pe bevar dervez gant ar pez a jomje.

Caer en devoe ober sioul he droiou, e voue dizoloet gant ar zervicherien, hag ar re-ma en em glevas da denna ive eun dro dezhan. Eun dervez ma voa digaset keuneud leun ar c'horn tro, e stagjont neud oc'h an tamou var gorre, hag ar penn all euz an neudennou-ze a ioa stagué oc'h ar c'hleierigou a voa a zioc'h dor ar staliou. Miraflores a deuaz ervez he gustum, ha kerkent ha m'en doa croguet en eun tam coat pe zaou, e savaz eur stirling evel pa vije cant o c'houl digor. An oll a ziredas, mevellou, plac'hed, ha beteg he c'hreg. Ha petra gachont? Miraflores en he viscamant noz, eur vriad keuneud gantha, ha chomet eno ker balc'h ha ker sebezet na vouie na petra da lavaret na petra da ober. Ne ouzon ket hag hen a dennas frouez euz ar guentel-ze, ar pez zo sur eo e voue c'hoarzet avoalc'h dezhan, rag an abaden-ze a voue anavezet dre gueur oll antronoz, hag ar grenn hotredou a iea hag a zeue ebioù an ti en eur gana :

Miraflores an tonton,

eo mestr ha skuer al laeron ;

Da viret oc'h re a dan

Ec'h en em laer he unan.

G. M.

(Eur pennad all euz vech-all.)

Hano ar Zant evit ar Sizun-ma.

DILLUN, 25 Du. — Santéz Catell, guere hez ha merez.

DIMEURS, 26. — Sant Andre Avellin.

DIMERC'HER, 27. — Sant Ian ar groas.

DIZIOU, 28. — Sant Nazer ha Sant Cels, merzerien.

DIRGUENER, 29. — Sant Houardon, Escop.

DISSADORN, 30. — Sant Andre abostol.

DISSUL, 1^a Kerzu. — Kenta sul euz an Asvent.

An Abostol Hirio.

Va breudeur gouzout a rit eo deut ar mesaer hag evel dioc'h hor c'hoar, rag tostoc'h eo brema an s'p'it'el digouezet deomp evit na voa pa on eus recevet ar feiz. An noz so eat ebioù, hag an deiz a dosta. Lezomp eta an oberou a denvalien, ha lakeomp armon ar sclerijen en dro deomp.

Baleomp eta evel tud dereat, tud hag a vale en deiz, n'en em roit ket d'an dizurs, d'ar vesventi, d'al liguentez, d'an dizonestis, d'an dizunvaniez, d'ar goarisi; mes en em viskit euz a Jesus-Christ hon Aotrou.

Lizer Sant Paul d'ar Romanistet, XII. II. G. M.

KEBBIER.

An Aotrou Quemeneur, bet professor er seminar, so hanvet person Plougonvelin.

An Aotrou Castree, person Brennilis, so hanvet person Plouedern.

An Aotrou Trevidic, person Lanneuffret, so hanvet person Brennilis.

An Aotrou Gourmelon, bet vikar e Bannalec, so hanvet person Lanneuffret.

Al listen digor er ti an Aotrou de Kerangal evit ar Pap en he izom brema a zo hirio da bevarzeg m'ha d'oc'h hant c'huezec lur ha pevar ugent (14,296).

Parrez Plomelin, en eun tamig kest great evit an Tad Santel ar Pap, e deus savet seiz cant lur.

Goude beza merket ar zom-ze, an *Impartial* a lavar: Hon lennerien a vezo ker souezet ha ni o velet pognement a so savet e parrez Ploumilin da gas d'ho Tad Santel ar Pap evit kenderc'hel he zoudardet caloneg. Arabat eo en em drompla ar zom-ze, her gouzout mad a reomp, a zo savet dre eur guest great etouez ar hoñl. Person Ploumilin den din ha skiantel mad, sicouret gant eur mear euz ar re vella, en deus bet ar zouch euz da lacat eur gristenez vad bennag da vont a di da di da guest tal evit an dud courachuz a zifen hor feiz. Carout a rajemp lavaret gant pebez joa, gant pebez pros, gant pebez bolonte vad e tigre zoken ar re baoura ho balc'h. Ar zom savet a goms ere avoalc'h: *seis cant lur* eo ar hant savet en eun nebeudig derveziou etouez eur vozañk bretoned vad, labourerien donar.

Beleien canton Castellin o deus roet seis cant seis lur ha pevarugent evit derec'hel zouavet en arme ar Pap, 787,50.

An Aotrou Hilarion de l'Estang du Rusquec, euz a Dreflevez so eat er mis tremenet da Rom d'en em lacat e renc zouavet ar Pap, ha gantha daou gwendery gompez dezhan, an Aotrouez Gaston de Kermenguy euz a Gleder ha Charles de Coatgourden euz a Sant Yonay.

An Itron Durasquec, mam goz ar zouav jaouanc, e doa roet diaraog pemp cant lur evit lacat eur zouav e servich ar Pap.

Daou zouav nevez, euz an escopti-ma so eat en hent evit arme ar Pap, er sizuniou-ma; an Aotronez Poulpiquet euz a Fouesnant, ha Chancerelle, euz a Zouarnenez. — Euz a escopti Sant Briec euz eat daou all, an Aotronez August Daniel, ha Fransez Perrot.

Ervez ar gazetenn *Revue de la Presse*, ar pez zo savet hirio e Frans evit izomou an Tad Santel ar Pap, a ia da zaou vilion daou c'hant mil lur, pe ouспен. Lavaret a eller ouспен, rag kement so bet savet en Escoptiou a bell ne dint ket anavezet oll e Paris.

Baniel ar zouavet a zo bet toulllet gant eur voulet en emgann diveza. Ar baniel-ze, evel ma on euz he lavaret brema ez euz eur pennad amzer, a ioa bet roet gant itronezet euz an Americ. An hini he dougue e Mentana a zo he hano Jorj Cherze, euz a Boatie, unan a zoudardet coz Castelfidardo.

Aliou eur micherour d'he vap.

Va map, eur vicher vad a zo eun tenzor. Lavaret a el-lez freaz ha dicheg ez out pinvidik ma na c'heuz ket a zle ha mar chom eul liard en da c'hodel.

Doze en deus benniguet va labour. N'em oa ket eur guennek pa zis da zavel stal, ha brema em eus danvez, hag an dud a zell ouzin.

Peur liessa ar vicherourien, pa vezont deut guest da c'honit ho bara, a zao c'hoant gantho da veachi. Hoguen evit tenna frouez euz he veach e tleer sellet, ha sellet piz oc'h pep tra; goulenn aliez, da ober petra an drama? penauz e rer an dra-ze? Ma na rez ket evelse pa zi da veachi, eo guelloc'h dit chom er guær da grachat el ludu. Guelet a ri, dre ma zi, guez deliou glaz enho, tiez guenn, ha tud o vale var diou c'har. Hoguen, ep mont ac'hann, e veli ive kementse.

Guelet em eus micherourien hag a voa bet eur pennad amzer e Brest, ha ne anaient euz ar guær-ze nemet ar c'hae, ar c'hobi, dor kear hag ar glassi. O tremen dre Landerne n'o doa guelet nemet ar Pont; e Kemper o doa guelet daou dour en eur guichen, mes ne vonient ket pe var di an Escop pe var di ar Prefet e voant; e Montroulez n'o doa guelet netra. Petra lavaran-me? Eo, eo, gouezet o doa ped heur oa var gadran an ti-kear.

Va map, pa zi en eur bourg, mar guez enha calz hostalirion, bez sur ez euz er c'harter-ze nebeut a ar-c'hant ha nebeut a vuez vad en tieguezion, ez euz avad dre eno aleiz a botred dibenn hag a gar beva dibreder.

Pa dremeni dre eur c'harter, ma na velez ket al labourerien douar en bo farkeier da zao-heol, e c'hellez beza sur e cavi eun niver braz anezho en hostaliri goude cuz-heol.

Pa glevi ar c'hleier o son evit eur gouel bras bennag, laca guenneien en da c'hodellou, rag aleiz a glaskerien bara a deui da c'houlenn eul liardig ouzit.

Pa veli ar bourkiz, ha tud divar ar meaz en ho zouez, oc'h ober gouel e creiz ar sizun, ec'h ellez cridi ez euz eur c'houbl-cam bennag prest da goeza, da lavaret eo, e vezo ep dale laket an alc'hoez dindan an or en eur stal bennag.

Pa veli var an hent peulion sanclen en douar, ha varnezho scritellou evelen: *Arabat eo chasseal ama...* arabat an dra-ma... arabat an dra hont... Laca evez eno oc'h an archerien, rag ar re-ze eo potred an arabat... Ma na gavez peul ebet var da hent, dalc'h da grabanou e doare d'as tifen.

Pa dremeni dre eur gear, mar guez guesot glaz er ruiou, poullou dour ha camejou pe skeuillo ejennet en hentchou a dost, kea buhan ac'hano, rag evit eno ne gav ket a labour.

Evit guelet cals tourion ha cals tiez caer en eur gear, ne lavar ket: *houma so eur gear vad!* evit guelet eun den mouchouer seiz en dro d'he c'houzoug ha rokedenn mezer du var he guen, ne lavar ket: *hema zo eun den a zoare!* evit guelet eur bod braz a ilio azioe'h dor eun hostaliri, ne lavar ket: *ama ez eus quin mad!*

Evit gouzout pe vras pe vian eo eur gear, ne ket red dit ober tro ar gear-ze. Evessa epken oc'h an dud. Seul-vui a veli o tenna ho zog an eil d'eguil, seul vianoc'h eo kear.

Mar guez an dud divar ar meaz o chom ep tenna ho zog d'ar vourc'hizien, e c'hellez lavaret eo treac'h kentelion an tieg da guentelion ar mestr-scol. Mar guez al labourerien douar o tenna ho zok hag o stouet dirag ar vourc'hizien, na jom ket eno, re bounner eo ar ieo so eno var guen ar vicherourien.

Mar digouezez en eur c'harter eleac'h ma veli an hentchou e doare, guez frouez a dost dezho, parkeier carguet a ed, nebeut a zouar difrost, nebeut a beorien var an hentchou nag e corn ar ruiou, tud hag a ro diguemer mad d'ar re a zigouez, chom eno; eno e cavi labour.

G. M.,

PRIZ AN ED.

KEMPER. — 16 Du.

Priz ar c'hant lur.
Guinis... 46 lur, 80 c.
Segal... 44 lur, 22 c.
Eiz... 40 lur, 28 c.
Ed-du... 7 lur, 84 c.
Kerc'h... 40 lur, 19 c.
Avalou-douar 5 lur, « c.

PONT'NABAT. — 14 Du.

Priz ar c'hant lur.
Guinis... 48 lur, 34 c.
Segal... 43 lur, 45 c.
Eiz... 41 lur, 88 c.
Ed-du... 40 lur, 44 c.
Kerc'h... 44 lur, 38 c.
Avalou-douar 5 lur, « c.

Ar Gerant: AR. DE KERANGAL.

Kemper, moulet gand AR. DE KERANGAL, Moullan an Escopti.

FEIZ HA BREIZ,

KELOU A BEP BRO, HA KENTELIOU VAR BEP TRA.

DIGASSET BEP SUL

Da guement Christen a goms ar brezouneec.

Eun Abonnamant d'ar Gazeten à goust :

Evit eur bloas... DAOU SCOUET.
Evit c'huoc'h miz... EUR SCOUET.
Evit tri miz... C'HUEC'H REAL.
Eur gazetenn ebken... DAOU VENNEG.

Ar baecamant a dle beza great araog caout ar gazetenn.

ALIOU.

Ar scrijou a ve c'hoant da lacat er gazetenn a dleer da adressi oll d'an Aotrou MORVAN, Beleg e Kemper.

Ar paecamant a dleer da adressi d'an Aotrou SALAUN, ebken. An abonnamant a guemerer e ti an Aotrou SALAUN, librer, ru Kereon, e Kemper.

KEMPER, 30 Du 1867.

Var araog! Ato var araog! Ato var gresc, ep ean na termen! Setu ar pez a leverer, setu ar pez a c'houlenn hirio. An naontevet cantvet eo, a leverer, an hini a ia var araog dreist an oll cantvejou all. Nep a jom a za ne ket din da veza var an douar en amzer-ma. Eur chans eo eta evit ar re zo hirio er bed, rag ma vijent deut eür c'hant vloas pe zaou kentoc'h, n'o divije ket guelet ar prez-ze da vont var araog, n'o divije guelet netra euz an traou ijinus-ze a velomp bemdez, n'o divije ket bet an honor da gomz oc'h an dud gouezieg, an dud a speret a gaver brema a zousennou hag a gantchou.

Petra ia var araog, var gresc? — Pep tra, a leverer. — Ia, mes ep ean hag ep termen, ne gredan ket e ve an dra-ze guir. Eur c'hreunen ed a daoler en douar a vreïn da guenta, goude e vraguez, e tiouan, e poulz eur c'heoten, eur goloen, eur penn; mont a ra-ta var araog, var gresc, ia, mes eur vech deut greun er penn, ne gresc mui, ne da mui var araog. Caout a ra-ta eur termen.

Eul leue a zavet hag a velit o creski, o vont var araog. Ia, mes ma tale'he da greski ato, ho craou a ve ep dale re vihan, ha marteze zoken n'o pefe ket a vouet avoalc'h da rei dezhan.

Eur map oc'h euz hag a velit ive o creski, o vont var araog. Ia, mes ma cresse bepret pelec'h e c'hae'hu dillad d'he c'holo? Souden e ve red deoc'h huellaat dor ho ti, creski hoc'h arrebueri, hag ober zoken eun ti nevez. Ha c'hoas... Nag ar plant eta nag al loenet, nag an dud ne ellont mont var araog, ne ellont creski ep termen.

Mar deuz eun dra bennag hag a ia ato var araog, eo an amzer, eo ar vuez, ha c'hoaz ar vuez hag an amzer o deuz ho zermen. Bez'ez euz eun dra hag a dlize mont ato var araog, var gresc; ar mad. Hoguen ha mont a ra? Ha guelloc'h ompni evit hon tadou coz? Ha bez'on eus ni muioc'h a vadelez, a garantez, a furnez evitho? Ha guelloc'h cristenien ompni? Ha miret a reompni guelloc'h

lezen Doue? Mar lavarit, ia; diskuezit; mar lavarit, nan, ne da ket eta ar mad var gresc; marteze zoken e ve cavet hag a lavaret ez a var adren.

Oh! eme c'hui, ma n'omp ket guelloc'h cristenien evit hon tadou coz, da viana on eus mui a speret evitho, muioc'h a skiant, muioc'h a ijin, e c'houzomp guelloc'h lacat an traou da dalvout. Hor gouezieguez so calz en tu all d'ho hini! Ha ne velit-hu ket an traou caer ha burzuduz a rer hag a zaver hirio? Ha ne velit-hu ket an den hirio o lacat an tan, an avel, an dour, ar gurun zoken, en eur guer, couls lavaret ar oll draou crouet, da zenti outhan evel pa ve hen en dele ho great? Ha setu dres penauz e leveromp, ez eomp var araog, hag ez aimp ep ean hag ep termen.

Guir eo Doue a les ato bep en amzer an dud da zizelei unan bennag euz ar secrejou en doa euzet outho er penn kenta. Hoguen kementse ne ro guir da zen ebet da ober fae var an amzer goz; rag mar dizoloer hirio traou nevez, en amzer goz e reat ive; mar caver brema tud a speret, tud ijinus, guehall e cavet ive. Ha caout a ra deoc'h hu e voa he speret hag he skiant en he voutou gant an hini en deus cavet ar c'henta an doare da ober poultr? e voa he zaoulagad en he c'hodel gant an hini en deus great ar c'henta montr pe ar guenta horolach? e voa diot an hini en deus moulet al levri kenta pe savet ar c'henta lestr brezel? Mar guelomp hirio ober cals traou caer hag ijinus, e c'hellomp trugarecat, ar re so bet en hon raog, hag anzaou, ep mez, eo hi o deus roet sicour deomp da ober ar pez a ra hirio hor longue. L. S.

Eur blijadur eo comz euz an bers calon, euz ar gou-rach o deus diskuezet soudardet ar Pap, hag euz an taoliou caer o deus great. Eur toullad zouavet a gavaz eur vanden dispac'herien en eur chapel. Ervez ho guiz, an dud difeiz ha dizoue o doa eno discaret ar groaz ha great aleiz a dorfejou all. Ar zouavet, eat drong enho o velet traou ken iskiz, a iea d'ho laza oll pa zigouez eun ofiser hag a c'hourc'hemen lezel ho buez gantho. Ober a ra

dezhio epken sevel en ho za ar groaz ha skeudennou ar
zent o doa discaret ; ha neuze ho laca etouez ar brizo-
merien-all ep ober droug ebet dezho.

Eun ofiser chasseurien a iea abrez dre eun hent doun
da ober eur guefridi. En em gaout a ra var he hent eun
boullad dispac'herien cuzet adre ar bodennou, hag en em
lakeont da denna varvezhan. Hoguen ebioù e scojont.
An ofiser ne varc'hata ket ; mont a ra en eul lam varzu
e enebourien, he zabren gantha en he zorn. Guelet a
ra an dispac'herien o stleper ho armou en eur foz, oc'h
en em deleur d'an daoulin, hag o crial en eur vouela :

— Trugarez en hano ar Verc'hez Santel !

An ofiser o clevet hano ar Verc'hez n'ho lazaz ket,
mes gourc'hemen a reas d'ar seis labasken, rag seiz
gant oc'h unan, lacat ho daouarn adre ho c'heia ha bale
en he raog. Hag e rejout evel ma lavare.

An holl dispac'herien, evel kent, ne voant ket ken
figalon-ze. Lod anezho o deuz en em gannet evel tud
counaret. Lavaret a eljet e voa an droug-speret en ho
c'breiz kement a leoudouet hag a voal bedennou a los-
kent.

Eur zouav a voa bet tizet gant pemp boulet. Bep hini
her scoe, e rea gant he veut sin ar groas var ar gouli.
Ar beleg a heuille ar vanden-ze a lavare dezhan :

— O va mignon, goal laket oc'h bet... pemp tenn !
pemp boulet !

— Ia, eme ar zouav, en eur boket d'ar grucifi roet
dezhan gant eur *sœur*, ia, evel horzalver, pemp gouli !

Ar zouav-ze a rer Sevilla anezhan hag a so guinnidig
euz ar Perou.

An Tad Santel en deus laket cana eur zervich solanel
evit ar zoudardet maro o vrezekaat a enep an dispac'he-
rien. Fallout a ra dezhan e ve kemeret ar brassa soursi
euz an oll re vlesset, ken a donez he zoudardet, ken a
donez he enebourien.

« Ra vezo, emezhan, ententet mad oc'h ar re so gou-
let ; red eo ober guella a vezo gallet d'ar brizonierein.
Roit dezho dillad ma n'o deus ket ; roit dezho bouet
e chus kement hag a gariut, macaroni, bara, kig.... Na
roit ket a vin dezho avad, emezhan en eur vusc'hoarzin,
da dra-ze a zafe d'ho feun, hag ho fenn so dija tom
avoale'h. »

E Mentana eo bet roet ar stourmad diveza, an hini e
deus discaret an dispac'herien. C'huec'h cant anezho so
bet lazec ; c'huezec cant so bet great prizonerien, ha
c'hoaz ez eus lezet seis cant all da vont kuit. Sourdardet
ar Pap o deus collet ken nebeut a dud, ma c'heller lava-
ret a dra sur edo eno, breac'h an Aotrou Doue oc'h ho
barpa.

En em lizer e lenner an dra-ma : Eun dispac'her, o
crena gant he aoun, ne vouie pelec'h tec'het, hag en em
blantaz en eur c'houfr. Digonezout a ra eur zouav, hag e
vel etre daouarn an den reuzendik-ze eur ciboar coaguet
da toriet, hag ar pez zo goassa, bez'ez oa c'hoaz enha
armou euz eun hosti sacr. Clasket e voue eur beleg, hag
hema a zestumas gant respet ar bruzunou a ellas da

gaout. Nag a dorfejou evelse n'o deus ket great an dud
difeiz-ze !

Eun dra hag a so bet laket evez outhan epad an aba-
dennou so bet en Itali, eo ar c'hem a gavet etre drem pe
bizach ar re varo etouez soudardet ar Pap hag ar re varo
adonez an dispac'herien. Avoalc'h oa ho guelet evit la-
varet a be vanden e voant. Ar re so maro euz a enebou-
rien ar Pap a voa heuz ha scrij ho guelet. Tres ar gounnar
hag an dizesper ne voa ken var ho drem.

Gouscoude, evel ma lavaremp brema ez eus diou pe
deir sizun, an dispac'herien-ze ne voant ket oll tud difeiz.
E godel unan anezho eo bet cavet al lizer-ma scrifet gan-
tha d'he vam :

« Oh, va mam ! pardonit din ar torfet am eus cometet
hag ar boan am eus great deoc'h. En despet din eo
emaoun ama. Red eo din ober an eil pe eguile : Mervel o
vrezekaat pe mervel a daolion contellasen lazec gant ar
re-ma. Hoguen ober a ran va zonc'h. Heuilla a rin hoc'h
ali, ha c' hui a lacai va zad d'am pardonit, hag a bardono
din ive hoc'h unan. Rei a reot din ho pennoz, hag em
lessot c'hoas da vont da boket d'ho torn. »

Al lizer-ze zo bet cavet etouez liziri ha papertou-all a
voa traou ar re divalaoa varvezho.

En eur lizer all e lenner kement ma : An dour a
vake en unan eul al lec'hioù ma casset ar zoudardet
gouliet. N'oa ket eur veraden zour da rei d'ar reo doa-
ser'het, na zoken da voalc'hi ar gouliou. Ar c'hoarezet
ne c'het o elasc gouzout petra da ober en em lakeas da
bidi Doue da gaout truez oc'h an dud keiz. Epad ma
e lont o pili, unan b'nug a zonzaz oc'h lod euz a vein ar
pave a ioa goascou etrezho haga voa eun tamig leiz. Se-
vel a rejot unan bennag euz ar vein-ze, ha dindanho e
voa eur puns ha dour ker cre enha.

Casset e voue dour d'ar re c'houliet. Eur zouav
iaouanc a voa eno ha ne bade ket gant ar zec'het hag an
derzien. Gouscoude ne fellas ket dezhan eva d'ho hui,
mes lavaret a reaz o tiskuez eun dispac'her gouliet a voa
en he guichen : Roit da hennez da guenta ; hennez a
ioa ama em raog-ma

Eul lizer scrifet euz a Rom gant an Aotrou Testard,
Arc'hescop Pors-ar-Prins, a gomz euz a ners calon eur
zouav iaouanc hanvet an Aotrou Robinet, bet gouliet en
eur c'hazern eleac'h m'o doa an dispac'herien laket an
tan er poultr.

« Ar vedesinet, eme an Arc'hescop o scrifa da dad
ar zouav, o doa discleriet e voa red-troc'ha dezhan he
c'har. Ar c'hoarezet ha me on doa aoun ne alje ket an
den iaouanc kez gouzaon an trouc'h-ze, ken dinerz en em
gave goude beza bet kement bronduet ha gouliet. Lacat
a ris goulenn ali medesin braz ar zouavet, dre m'on doa
oll ar brassa fizians enha. Hema a ziscleriaz e crede e
voa c'hoaz ar zouav cre avoalc'h evit herzel oc'h an
trouc'h poanuz-ze, ha lavaret a reaz ouspen e voa sur
da vervel ma na drouc'het ket he c'har. Neuze ez iz, an-

keniet meurbet, da gaout ho map ; goulenn a ris digantha
ha coutant oa da c'houzaon c'hoaz ar boan-ze evit ma
c'helje chom beo evidoc'h hag evit an ilis. Stoua reaz he
benn evit diskuez ec'h asante ; hoguen da guenta e c'hou-
lennas receo he Zoue. Pa en doa kemeret magadurez ar
re gre, e lakeaz he c'har etre daouarn ar vedesinet. Netra
skueriussoc'h evit guelet pe guer courachuz ha pe guen
didrouz oa. Epad eur boan ker scrijus, ne loscas nag eur
glemaden nag eur griaden. Ar vedesinet ho unan a ioa
souezet o velet he ners calon. Epad ma troc'het he
c'har, e fume he *sigareten*.

Ne gollin ket ar guel, eme an Aotrou Arc'hescop en
eur echui, ne gollin ket ar guel euz an den iaouanc ca-
lonec-ze.

Ne skuizer ket o coms nag o clevet comz euz an dud
calonec-ze so e servich ar Pap. Sonezet e chomer o ve-
let pe guer courachaz int ha pe guer mad e c'heuilout
ar relijion, petra bennag ma c'hortozet kementse di-
gantho.

Eul letanant hanvet Dufournel a iea da guemeret eul
leac'h var an dispac'herien. Lavaret a rer dezhan e voa
eleac'h ma zea, daou c'haut antercant dispac'her, hag
hi ne voant nemet pemp ha daouguent. Dufournel a
gaf eun dragon var vare'h, hag a lavar dezhan : Redit da
lavaret d'ar C'habiten Guiche ne d'omp nemet pemp den
ha daouguent, mes evel kent e staguimp d'an enebou-
rien.

Nenze o trei oc'h he vandennadic : alo ! Aotronez,
brema euz meneg evidomp da vont d'ar maro. En hano
an tad, hag ar map, hag ar speret Santel ! Var araog !

Mont a reont, hag en em rentont mistri euz a eun ti e
peno ar gueriaden. Stanca a reont varvezho en ti-ze. An
dispac'herien a zigonez en dro d'an ti, hag ho niver a ia
ato var gresc. Red e vije ep mar d'al letanant hag he
vandennadig en em renta. Hoguen Dufournel a lavar eo
red eo em denna ac'hano hag en em deleur var an enebou-
rien. Gant eun taol sabren e tiscar eul loden euz ar
pez a ioa laket da stanca outho. Ne ellent mont er meas
nemet hini hag hini. Dufournel a lam da guenta hag a zo
treuzet gant peder baronetez varnugent. Ar c'henta var
he lere'h a zo goal c'houliet ive ; mes etre ma stourme
an daou-ma, ar zouavet all o deus gallet dont euz an ti,
a bil var an dispac'herien hag a ra dezho kemeret an
teac'h.

Al letanant a voue douguet ac'hano da eur gambr, hag
a varvaz antronoz goude receo he zacramanchou. Tud ar
gueriaden a felle dezho dont d'ar gambr ma edo hag a
lavare : Ne ket da bidi evithan eo e teuomp, da c'houlenn
lod en he bedennou eo.

Al letanant Dufournel en devoa eur breur Cabiten
etouez soudardet ar Pap, a so bet gouliet ha maro eun
nebeut goude ive evel eur Zant.

Eur beleg euz ar re a heuille ar zouavet a scrife ive enz
a Rom : Eun dra skueriuz ha dispar oa guelet an Duc de
Luyne. He unan eo eat da glasc an dud gouliet var da-

chen ar vrezel. O tont ac'hano edo er penn ar boan-ze
c'har, hag evel ma voa ien, eo bet guelet o tiskuez
zae evit golo eun den-mac haniet a vele o crena gant
riou.

Setu aze a dra sur traou hag a lenner ato gant pizadec'h,
ha n'eus ket izom da ober ho meuleudi.

Marseil. — En dez all eur beleg euz a guer Marseil
dremene eur c'harroz ebioù dezhan en eur ru. Eun den
iaouanc a lakeaz he benn er prenest hag her pedas da bi-
gnat er c'harroz en he guichen, rag m'en doa eun den
bennag da lavaret dezhan. Ar beleg a bignaz, hag an den
iaouanc a lavaras dezhan : « Me eo ar C'hont... Mont
a rau henoze en hent evit Rom, evit difenn hon Tad San-
tel oc'h en em lacat etouez he zoudardet. N'em eus
meur a amzer ; ma o pete ar vadelez d'am c'hoaz. Ar
beleg her c'hofesseaz, na petra-ta, hag a ziskennas le-
reet he galon o velet feiz ha ners calon an den iaouanc-ze.

Ar C'hont... evit mont da zifen hon Tad Santel
Pap, a guita he dad a zo dija coz, teir c'hoaz hag a
c'hoas iaouanc flam, hag he vam a zo maro o eus
ouspen tri miz ! Setu aze, ep mar, tud a galon !

G. M.

BREMA HA GUECHALL

Ia sur, eva a rear en hon amzer, eva abred, pa vezer
c'hoaz krenn baotred ; eva aketuz, beveach ma kava-
tro ; eva stard, en tu all d'ar pez a c'heller da zongez,
da c'houzaon, kement ma teu en dro, dre ar c'houzaon,
eul loden vraz euz ar pez a vez bet louket. Me lavar
traou kempenna ma-bellan ; Ne fell ket d'in lakaat
nep den da heugi, da gemeret doujer, da goll naz
leiu, nag he goan : enz va feiz an dra-ze a ve fall ha
lo. Eva a rear e peli oad ; kalz a vugale, re a vugale,
siouaz ! a vez desket, a vez boazet da zével var ar vrez,
da lonka memez *traou melen*, dreist oll *traou melen*, hag
hi c'hoaz en ho zae ; ma na garont lipad, ober kovad
euz ho feun ho unan. Hoguen, ker stank ec'h ever dirazo,
m'en em roont d'ar red da ober evel ar re all, evel
re vraz, hep ma ve tam izom d'ho c'helen, d'ho fidi.

Ia, ia, eva a rear, evel pa rankfet beza *mesvier*, *kal-*
ken, *lonk-he-zizun*, *fripp-he-drantel*, evit goude
baradoz. Gouskoude eun doktor braz ha brudet, mar
d'euz bet var an donar, eun den a garie, mmoc'h evit
Lan an Dall, henvel an traou dre ho hano guirion, da
c'houzoud eo, an Abostol Sant Paol, en d'euz lavaret
d'euz skrivet en unan euz he lizerou : *neque ebumus*
regnum Dei possidebunt, e rouantelez an Enn n'euz kom-
ebed evit al lonkerien. Var an gont-se meur a gov, braz
nousped ar zenklen a ranko trei kein d'ar baradoz
mond da glask ho chans e leac'h all ; hag an dra-ze
dle beza e guirionez. Penaoz e ve digemeret, e mes
Elez hag ar Zent, kanfarted, ailloned a vez gantho c'houz
ker fall, falloc'h c'houez eget gant ar bleiz, kargourien
zo boaz da stlapa begadou, ginaouadou fleruz, traou

troet, traou trenket, n'euz forz dirak piou, bezet zoken en ilizon? Ar rezeou a rafe donjer d'an Aotrou Doue he unan, d'ar Verc'hez Vari he unan! Mad eo eta, red eo eta, evit peoc'h hag eurusded an dud honest, an dud a zoare, an traou kempen ha lipouz, e ve dal-c'het an hevelep truillou er meaz euz ar baradoz. Oh! mesvier udur, mar fell d'id kaoud lojen enn tu benak, kea eta d'en em erbedi oc'h an diaoul, kea da glask eur c'hornik e ti an diaoul, en ifern! Ah! paour keaz, eno gouskoude eo e ranki koeza... hag eno ec'h helli eva kement ha ma kari, mutoc'h, pelloc'h, evit na gari; bommou tan eleac'h banneou melen; ha, da vraz ma vezo da zeo' hed, da itik, biken na zeui a benn d'he zerr, kaer a pezo eva, kaer a pezo lonka. C'hoarz brema oc'h va e' hleved; mar d'eo da ioul: mesvier, gra goaperez var gomzou Lan an Dall, kan, lamm, string oc'h heul da vanneou en hostaliri!... Da vanne diveza a evi var an douar... da gorfad diveza a ri e kear, pe var ar meaz... goudeze an diaoul, ia, an diaoul, kleo mad, a vezo da hostiz, a ziskargo d'id da eva, a vourro d'id da vouzelou, a blanto en da vouzellou *su' muoc'h, su' c'hoaz*, ma lavari-te a bouez penn: *avalc'h, avalc'h... paouez eta, diaoul!!!*

Ia, houma eo brema amzer an everien, amzer al lonkerien, evel n'oa ket guechall, da vihana e bro Leon!... Guelit da zeiz marc'had, da zeiz foar, pa vez banked eured... It var an henchou, dre ma tostaio ar pardaez; depordit ma vezo deut ar zerr noz, ma vezo dek, unnek heur noz, anter-noz... ma na deo ket re bouner ho penn, ma na doc'h dare gant ar c'houssked, chommit var zao, var evez, bete diou, teir heur dioc'h ar mintin, bete goulou deiz... sellit, sellit... selaouit... petra zo aze o tond, o c'hrogna!... Pe seurt doare aneval eo hennez a glevit o trouzal?.. hag hen a zo eur pemoc'h, eur marc'h dianked, tec'het divar he hent?.. Mez n'en deuz nemet daou droad!.. Petra eo al loen a velit o trabasad er pri, o steki he benn oc'h eur vezen... a glevit o c'hrosmolad, o iouc'hal er vouillen? Petra eo a glask an tam tra zu, bris-du, a zo gourvezet pelloc'h er loz, a zo oc'h en em ruilla er vaoz, en hanvoez?... Petra fell d'an tri-ma a zo oc'h en em heurta, oc'h en em ziframma, oc'h en em ganna, o pec'hi, o nondeal, o toubleal... dre ma hellont chomm en ho za, dre ma tizont trei ho zeod en ho ginou, sevel an eil dorn var lerc'h egile, ha tenna ho zreid a douez an drez, a greiz ar spern? Petra eo ma'zeo kousket hennez var an hent a stok he gorf, ar glao o kanna en he c'hinou... hennez all var eur bern mein, he zaoulagad beuzet er goad, he ziou chod persduet... hag hennez all a dreuz kov var eun draf, evel eur zac'had bleud var marc'h eur portezet?...

E mare an hany, goude ma vez bet sec'hor ha tomder eun diou pe deir zizun, pa zeu soublien da heul eur barr arne, gant an noz e kaver, evel a ouzoc'h, o vond a hed, a dreuz gant an hent, oc'h en em ruza, oc'h ober pik-lammou, eun darn loned ken tuzum ha tra, loned druz, loned c'houezet, unan ama, unan aont, daou pelloc'h, tri en eur c'horn, pevar en eur venojen, meur a veach,

re stank an oll etre an treid, dindan an treid... loned na vez ket nemeur a joa othou, a bak d'ar red nousped an taol troad, avechou goasoc'h... loned a vez galvet tousigi... a vez neuze, evit doare, ec'hiz tud chentil, o kemeret an ear noz... pe, ec'hiz tud keiz o klask ho zam... n'ouzon ket d'ar just petra (vez en ho spered)... n'em euz ket her goulennet digan ho... ha me her goulenno biken?.. chansuz eo! Mad sellit... chetu aze da zul, da c'houel, en distro euz ar foar, euz ar marc'had, euz ar friko... penaoz e vez o' troidellad, e mare an noz, pell en noz, var an henchou, dre ar strojou... oc'h ober gon, oc'h ober heuz a gleiz, a zeou, en bourkou, er parkieg, oc'h ar c'haeou, er ribouliou... a bep tu, eur maread a lonkerien, eur c'hroz ar roullerien... en em denn, en em ruz d'ar gear gant poan, divezad, divezad, ho d'euz nebeutoc'h a diz, lod anezho, eger tousigi guirion... nebeutoc'h a skiant eget tousigi a eur bloaz. Da verr, me gred ervad, ma vez ar skiant e penn eun tousek a eur bloaz, hag e ve bet ganet e kear... evarien, bordellerien, a gaver ive, kalz re stank, etre an treid, a venn diskar d'an douar, a laka da lammed, a laka danger da derri ho divesker, ho gouzoug, ha Per, ha Iann, ha Guillou, tud divez a rank bale en noz, a ia eun gant ho hent, hag a stok re valc'h ho zreid oc'h hidop eur galken kuzet en denvalijen, oc'h penn, oc'h stomok eun druillen a vez he vele e pep leac'h... ab bod'riem

Eva a rear... eva a rear... o va Doue, ha me gred ho lavared?.. Paour keaz Lan an Dall, laka evez oc'h gorf, vez ar marc'hed! Mar bez red d'id tremen abiou eun ti forn, pe eur poull kanna, diouall ha digor mad da zaoulagad!.. Deomp atao... Lan an Dall, eur breton koz, savet evel a ouzoc'h, n'hell ket kaoud aon oc'h anzaou ar virionez. Kaozeomp eta, hag e saffe egar en oll merc'hed, hag e rankfe eur goaz benak mond da frota he gov oc'h menhir Plouarzel... sellit, klevit... Petra eo an dra-ze? Ah! ne ouzoc'h ket evit piou eo great menhir Plouarzel!.. Mad... evidon-me n'em euz nag amzer, na faltazi d'hen deski deoc'h. Goulennit-hen, mar kirit, digant ar goazed a vez bet great eun heja dezo gant ho marc'hed, a vez bet kribet gant ho c'hegined. Ah! goazed keiz, ker brao ec'h ouzoc'h eva, m'oc'h euz lakeat an dour da zond e ginou ar marc'hed, ma rankit brema ranna gant ho marc'hed... dreist oll ho *panneou melen!* Selaouomp Laouik an Dero, ha kanomp var he lerc'h, hag ho deffe mez ar marc'hed.

- Tra iskiz, tra mezuz!
- Oll soublomp hor pennou...
- O heol madelezus,
- Na bar mui en Envou!...
- Ha ni tud eur vro gristen,
- Ni vel, siouaz! a c'harden,
- Hag a zeou, hag a gleiz,
- O tivoan mesvrierezed,
- O sevel lonkerezed,
- Dre bevar c'horn hor Breiz!

- Ia, marc'hed a veler,
- Re iaouank ha re goz,
- Ia, marc'hed a gaver,
- Hag en deiz hag en noz,
- A darc'houez, a rank termad,
- Ker reud e vez ho c'hovad,
- A boan a hell bale,
- A dourt, a gann ar c'hleuziou,
- A gousk, a roc'h er fosiou,
- Evet en ho guele!

Guechall pa vedon-me e sevel, eun den iaouank, eun den iaouank, klevit mad, anez koll raktal he fortun, ha greded peb plac'h o kerzed diouthan evel dioc'h ar vosen, n'helle ket lakaad he dreid en hostaliri, n'helle ket ober anaoudegez, amezegez gant Fanch an hostiz. Ne zeue neuze e penn den ebed e vije, e nep amzer, guelet en hor Breiz plac'hed, marc'hed, na re goz, na re iaouank, o vond d'an hostaliri, oc'h eva en eun hostaliri an disterra banne guin, dreist oll eur banne chigoden... Brema... brema... Aotrou Doue, petra veler en hor bro?.. Mar kendale' homp da gerzed gant an hent hon euz kemeret, e pe leac'h hep dale, e vezo kavet eur vaouez, eur plac'h, na ouezo sevel he biz en hostaliri, lonka peb seurt banneou en hostaliri, karga he bouzellou gant chigoden en tavarniou? Mond a ra ar marc'hed da genta d'ar c'hafe... an dro eo hounez evit en em gaoud gant ar chigoden, evit en em ober dioc'h ar chigoden. Boaza a ra ar marc'hed da vesvi... ha da vesvi gant chigoden e Leon, hag e Kerne, hag e Treger, e kement leac'h ma velot marc'hed mezo, ec'h hellot sonjal, ha kridi, ha lavared, ha prezeg int mezo gant chigoden, int kollet gant ar banneou melen... Ruz eo kribel eur geken, birvi a ra he daonlagad, sinkla a ra an tan euz he diou chod, gallegad a ra, mond a dond a ra, c'hoant e d'heuz da lammed gant an oll... Evesait, santit ha ne ket c'houez ar chigoden eo a zeufhe ginou? ha ne ket c'houez ar chigoden a zo gant he alan? Ma na ve ket eta!.. O marc'hed, o plac'hed mesvrierezed! O orin an diaoul, petra ne rit hu ket, petra noc'h-hu ket ioulet da ober? Naga draou mantruz a glever var ho kont! E pe stad a vez hu kavet nousped ar veach? Ama eur plac'h iaouank, astennet var bouez he c'horsad... ruillet divar an hent braz er loz, e kreiz an dour, a zo bet sammel en eur c'har evel eur vam-v... Aont eur Gatell gollet, re heak an hent braz evit he zreidigou, goude beza bet keit ha keit all oc'h heurta, o tourta ar c'hleusiu, a zo bet chommet da loja er meaz... En deiz all, Mari ar Bleiz, eur vaouez demezet a bell, zo dezi seiz krouadur, eur vilinerez dioc'h an dibab, en em gavet er gear euz ar marc'had, ne ouie na peur, na penaoz, tremenet ganthi he c'hovad ne vele mui na koef var he fenn, na tavan-cher var he barlen, nemet unan euz he boutou en he zreid, hag a ioa nec'het o klask gouzoud petra oa deut da veza eur zac'had traou a rea torchen dindan he lost var he marc'h...

Ah! marc'hed, marc'hed, plac'hed iaouank ha gragez! Evit eta kafe kement a garot, a leiz ar skudel, diou,

teir gueach bemdez, dioc'h ar mintin, da gresdeiz, var arpardaez, aliesoc'h mar deo hoc'h ioul, mar bezred gouzaon kement-se ganeoc'h, hag e koustfe kalz d'ho tud, d'ho koazed!.. Mez, en hany Doue, marc'hed, evit henor hor Breiz, evit ho kloar, ho iec'hed hoc'h unan, keit ha ma tougot losten, keit ha ma vezot karget, galvet da zevel bugale, da lakaad bugale er hed, na douchit ket oc'h ar chigoden, na redit ket an hostaliriou, na azevit ket en eun hostaliri, en eur c'hafe, e mesk kal-kennou a vez ken udur ho c'hemzou, e kichen lonkerien a vez ker fall brudet, a vev ken divalo!.. Dale hit dalc'hit mad d'ho penn, d'ar pezh hoc'h euz a skiant, evit ma reot guell an harp oc'h ar goazed roullerien!.. Aoualc'h eo, re eo e ve kement a c'hoazed o vesvi, o rei skouer fall, o tiskar ho ziez, o koll ho bugale, oc'h en em zaoni gant eur seurt prez!.. Evidoc'h-hu, marc'hed, kendale'hit eta da veza ar plac'hed fur, ar gragez santel, ar mammou kristen a zo bet meulet guechall gant Sant Augustin, *devoto femineo sexu*. Mar fell deoc'h mond var ho penn, c'honi ive marc'hed, mar rankit mond ive da lonkerezed, evit ober evel kement a lonkerien, kenavo neuze da blijadur, da henor, da feiz, da honestiz e mesk ar vretoned!!! O va bro baour, va bro baour!!!

LAN AN DALL.

LEVR AL LABOURER.

Eur vad ha dizeur eur Merer.

E-kichen ster Blaved, (1) e paress Nennec, Tost da chapel Karmez, enn tu ouc'h Cleguerec, Eul labourer em euz gwech-all anavezet, A wele da bep bloaz he ruskennou kresket; He wenan o nijal e pevar c'horn ar vro, Hag o suna ar mel er parkou tro-war dro. Evit meuli Doue, enori ar Verc'hez, Hag e pardon Kergrist hag e pardon Karmez, Eur piled enn he zorn, gant feiz ha devotion, Peb-unan her gwele e-kreiz ar procession. Da noz evel d'ann deiz, ermez evel enn ti, Hep arzao e pede ha Jesus ha Mari. Ho c'hanou evit-han ken douz evel ar mel, Hel lake da danvaat eur joa vraz ha Santel, Jesus, Mari ive, seul-wui m'ho ebore, Seul-wui roc d'ez-han merkou a garante. Holl he amezeien a wele gand ayi, Hag he liorz gwenan, hag ar meubl euz he di, Na pebez stad euruz evit al labourer, He c'hreg, he vugale c'hoaz enn eunn oad tener, Dirag he zaoulagad, desket d'adori Doue, A wele ho eur-vad o kriski c'hoaz bemde. Ar merer dievez a gassaz da Bondy Unan euz he baotred da ober he studi, Hag enn davarn ma ied da eva chopinad, Ha da loja he varc'h enn deiz euz ar marc'had, (1) Unan euz a steriou Breiz-Izel.

Hel lekeaz e pension. — Eno e klev bemde,
Ober goab euz ar Zent, ober goab euz a Zoue.
Kent pell e koll ar sonj euz ar c'huzuliou mad
A gleve enn he di gand he vamm, gand he dad. 1655
Pa zistroe d'ar ghear, dizemt ha dighempen,
Da viutin na da noz ne lere mui peden.
E lec'h mont gand he dad d'ar pardon da bidi,
Ne heul nemet tud fall, ne glask nemet c'hoari.
Hoghen gwenan ann tad a zeu da veza klan, 1666
Ha souden e varvont beteg ann divezan.
Na pebez kalonnad evid hon labourer !
Da chapel ar Verchez, glac'haret her gweler
O vont gant kalz a hast da gaout he Vamm Santel.
« O mamm karantezuz, o patronez fidel ! 1663
« Me, ho mab a zo bet bep bloaz enn ho pardon,
« Ho mab en deuz bepred ho pedet a galon,
« Petra em eus-me great vit koll ho karante ?
« Er bed-man ne gavenn enor ha levene
« Nemet gand ar gwenan am boa me diorret 1670
« Gand ar brassa sourci ; ha setu int kollet.
« O va mamm, piou a zeui brema d'ho pardonniou ?
« Ha dirag ho imch piou lakai he roou ?

AR MESSAER BERTELE.

(NAVET PENNAD.)

Ar marc'hadour pinvidik Miraflores n'en doa aoun nemet rag eun dra ; na deuje he zavez da vont var vianaat. Bez'en devoa cals listri var vor o cas he vadou euz an eil penn d'eguille euz ar bed, hag evelse bevech ma teue an avel da c'hoeza, bevech ma teue eur goal var amzer bennag ; an den paour ne alle ket cousket gant an nec'h en devoa na daje eul lestr bennag dezhan da goll.

Miraflores n'en doa ket a vugale ; hoguen n'en em glem ket a guementse, rag sonjal a rea m'a en divije bet bugate, en divije ranket dispign evit ho zevel, ho maga, ho guisca, ho scolia, ha dreist oll evit sevel argoulou dezho, ar pez a vije bet eur vantr calon evithan. Hoguen oll danvez ar bed-ma n'iot ket goest da garga calon an den ha Miraflores n'oa ket eurus ken nebent e creiz he zavez braz. Ato e veza tenval he benn, ne 'het gant eun dra bennag.

Eur bloavez d'an devez amzer, e voa o c'hortos daou euz he listri da zont euz an Americ. Caer en devoa gortoz, an daou lestr ne glevet hano ebet anezho. Miraflores ne elle na dibri bouet na cousket ; diou garg pinvidik braz a ioa el listri-ze. Scrifa a reas da gals persier mor, ha kelou ebet ne deue. Ma sonjas sevel he unan var eul lestr evit mont da glasc he zaou lestrad marc'hadourez, ha cas Bertele gantha.

Setu eta hor Messaer bihan var vor. A veac'h oant eat diou leo dioc'h an douar ma crogaz an droug mor enha. Bez'e voue eun nebeut derveziou oc'h en em ruilla varar pont, ha dalc'h mad, emezhan, e sonje dezhan e voa he ene o vont euz he gorf. Gouscoude abenn eur pennad e velleas dezhan, hag aboue ne voue mui clan.

Miraflores a glanz ive. Hoguen ne ket an droug mor eo a rea muia dies dezhan, an enouamant oa. Ne gomze nemeur oc'h den, ha n'oa ket troet ken nebeut var al leun, hag evelse ne rea nemet en em enoui hag en em jala. Bertele avad en devoa great buhan anaoudeguez gant ar vartolodet, hag a gave ber an amzer o trabellat gant-ho. Ouspen gulet a rea ar pez n'oa ket betmorse c'hoas dirag he zaoulagad. Petra zo caeroc'h da zellet outhan evit ar mor ha ne veler termen ebet dezhan ? ar c'houagou, an tarziou o sevel hag o tiskan, o venna gant an eonen ! An heol a zo eno ker skeduz o sevel hag o cuzet ! An oabl ker glaz ha ker gae a zioe h'ar penn, dreist oll en noz pa en em zispac stered ep niver ! Kementse a ra d'an der, mar en deuz eun tamic feiz, sonjal peguer braz eo Doue, peguer gallouduz eo an hini en deus crouet an oll draou caer-ze hag ho dalc'h pehini en he reng.

Bertele eta en em blije var al lestr. Daou, yiz, a ioa edont var vor, ha cridi a rea e velje an douar ep dalc'h Hoguen araog neuze ar potrig a dlie gulet n'oa ket pehini an oll darvoudou a dlie digouezout ganthan.

Eun nosvez Bertele a ioa gourvezet charz ar yern-vraz en em zestumet en he vartel. An amzer a ioa elduar hag ec'h ellet cousket evelse dindan bolz an eppou. Davar greiz he gousk e voue dihonet gant eur vouez a eall ! An tan el lestr ! An tan el lestr !

Ar messaer bihan a voue buhan var zao. Euz ar pehini varlerc'h euz al lestr e velet o sevel bouilladour moutlet ha flammou tan. An tan a ioa crouet e gouel al lestr er c'habab hag en traou all a doler eno da c'horren. Araog ma voa gouezet oa crog an tan, oar re zivezat evit gallout he vonga. Me ho les da zonzal peguement a drouz, a freuz, a zispac'h a zavaz eno neuze !

Ar c'habiten gouscoude ne gollas ket he benn. Guervel a reaz ar vartolodet hag an oll dremenidi en dro dezhan var ar pont, hag e lavaraz dezho e voa red coll al lestr, mes ma carje an oll senti outhan, e c'halje c'hoas saveter ho buez d'an oll. Bez'ez oa, etre tud a vor ha beachouren, ca. t. da. o. zen ; mes bez'ez oa ive oc'h heul al lestr pemp bag, brassoc'h an eil evit eben, hag a ioa avoalc'h evit savetei an oll, ma carjet lacat evez.

Hoguen it da glasc lacat urz etouez tud hag a zo e danger ho buez, hag a vel ar maro dirazho, hag a zo crog an aoun enho ! An aoun a laca an dud da goll ho skiant ha da veza zoken criz an eil oc'h eguille. O elasc gouzout piou a ziskenje da guenta' er bagou, meur a hini, gant ho enerez hag ho zrefu, a goezaz er mor hag a voue beuzet. Eod all, eur vech ma o doa gallet mont en eur vag, a dec'he kuit ganthi araog ma voa laket ehi an niver a dlie mont ; en bevelep doare pa voa eat peder bag kuit, ha ne jome mui nemet an diveza ha bihana, e voa c'hoaz uguent den var al lestr anter zevet, ha ne alle ar vag douguen nemet pemzec da hirra.

Penaus da ober neuze ? Piou a vije lezet el lestr da goll he vuez en tan ? Tenna d'ar zort ? Ne voue ket a izom da ober. Eno ez oa ive tud a galon.

Ar c'habiten a lavaraz dioc'htu ne guitaje ket al lestr.

Bez'ez oa ive etouez an dremenidi ne voant ket c'hoas diskennet er bagou, eur beleg ha teir leanez a iea d'ar missionou. Ar c'habiten a reaz eur zell outho, hag ep lavaret guer, e soubljont ho fenn evit diskuez e rojent ive ho buez a galon vad evit savetei ar re all.

Ar pemzeg all-ta a ziskennaz er vag, hag ar c'habiten he unan, evel pa ne vije bet tam trubuillet, ho zicouras da ziskan, a zistagaz ar vag evit ho lezel da vont kuit, hag a lavaraz dezho evit kenavezo : Doue ho reno ! Neuze ez eas da zaoulina e treid ar beleg, hag al leanezet a reaz evel dhan.

Abenn eun nebeut goude, al lestr a ioa oll e tan, ha ne velet nemet ar flam o sevel en ear, hag e creiz, ar pemp merzer a voa chomet varnezhan, ho divrec'h hag ho daoulagad savet gantho varzu an Env.

Etouez ar pemzeg a voa var ar vag diveza edo ive Bertele hag he vestr Miraflores. Calon ar Messaer a voa bet tennet meurbet o velet carantez ar pemp-ze a ioa chomet da vervel evit ar re all. Nebeut a dra zoken en divije he laket da c'houlon chom eleac'h unan anezho. Ne deas ket gouscoude he ners calon beteg eno. Hoguen var ar vag eleac'h ma edont n'oant ket ken nebeut re s'p'ez ho buez.

Pa g'uitajout al lestr, ar mor a ioa sionl. Hoguen ep dalc'h avel a deuas da c'hoeza, hag e tirollaz eur bar amzer scrijus. Ar bagou o doa dalc'het mad an eil d'eben beg neuze, mes neuze e vouent pouzlet hini ama hini about, ha n'en em veljont mui.

Ar vag ma edo Bertele varnezhi a voa, evel on eus lavaret, ar viana hag ar falla. Ar pez a voa goassa, ne voa enhi martolod guezieg ebet. An hini a zalc'he ar stur a voa, evit guir, eun den a vor, mes n'eu doa morse labourer vardro eur vag nemet dindan ren eun all. Gouscoude evel ne voa nemetha hag a vouiche eun dra bennag, e voa red mad he lezel da sturier. Rag, evel a lavare Bertele he unan goudeze, eleac'h ne deus nemet tud dall, eur horn so mad da roue, hag an den-ze ive etouez an dremenidi a ioa er vag, daoust ma c'hanaie nebeut he vicher, a voa c'hoaz ar guella martolod.

Hoguen sonjit nag a strafuil, nag a enerez ne dlie ket beza eno, o velet ar vag o sevel var beg eun tars bennag evel var guern eur menez, hag o tiskan goudeze var he fenn evel en eun islong ! O caout evit sturier eun den ha ne vouie ket ren ar vag, ha ne vouie ket peleac'h edo na peleac'h ez ea, pe hi a ioa tost d'an douar pe n'edont ket, pe varzu an douar braz pe varzu eun enezen bennag eo ez-eant ! Eun dervez hag eun nosvez e vouent evelse tolet ha distolet.

(Eur pennad-all eur vech-all).

Hano ar Zent evit ar Sizun-ma.

DILLUN 2 KERZU. — Santez Bibiana, Guerc'hez ha Merzerez.

DIMEURS 3. — Sant Fransez Xavier. (Pardon Breuriez ar Feiz).

DIMERC'HER 4. — Sant Per Chrysolog, Escop, ha Doctor euz an Iliz.

DIZIOU 5. — Sant Tugdual, Escop, ha Doctor euz an Iliz.

DIRGUENER 6. — Sant Nicolas, Escop, ha Doctor euz an Iliz.

DISSADORN 7. — Sant Ambroaz, Escop, ha Doctor euz an Iliz.

DISSUL 8. — Eil Sul euz an Avent.

An Abostol hirio.

Va breudeur, kement a so scrifet, a so scrifet evit hor c'helennadurez, evit ma c'houzanvimp ; ha zoken gant laouenidiguez dre an esperans a ro deomp ar scrijtoniou. Ra deui Doue, dre ma zeo gouzanvuz ha mad da rei frealzignoz (consolation), d ho lacat da gaout ar nemes santimanchou ha d'en em garet an eil eguille etre Jesus-Christ ; evit ma viot oll a unan a galon hag a d'ot evit renta evel m'eo dlet gloar da Zoue tad-hor Zalm Jesus-Christ. Rag-ze grit an eil d'eguille evel en deus great Jesus-Christ deoc'h evit gloar Doue he dad.

Discleria a ran en deus Jesus-Christ prezeguet an avel d'an dud emvoadet, (d'ar inzevien) evit diskuez e voa Doue guirion o seveni ar promessaou great d'ho zadoz. Ar boblou paien avad, mar o deus recevet an avel, eo dre an drugarez epken a Zoue, hag eo eun dever evitho he drugarec, ervez ma zeo scrifet : rag-ze, Aotrou, ho meulin etouez ar bobliou, hag e canin evit renta gloar d'hor'h hano. Ar scrijur a lavar c'hoas : En em laouenait, pobliou, gant pobl Doue. Hag en eil leac'h all : meulit Doue, oll broadou tud ; oll bobliou, rentit gloar dezhan. Isai a lavar ive : euz a c'hrizien Jesse e savo eur vouillastreu da ren var an oll bobliou, hag an oll bobliou a espero enha. Ra dem an Doue a esperans d'ho carga a laouenidiguez hag a beoc'h en ho feiz, evit ma cresco ato ho fizians dre nerz ar Speret-Santel.

Lizer S. Paul d'ar Romanistet. XV. 4. G. M.

KELEIER.

An Aotrou Dupont, person Pleyben, so maro en derveziou diveza-ma.

An Aotrou Trevidic, bel hanvet person Breunilis, so hanvet person Ploeven.

Euz a Locronan Leon ez eus recevet cant lur ha daou venneg evit hon Tad Santel ar Pap ; antercant lur daou venneg savet gant ar seurezet hag ar vugale so gantho er scol ; antercant lur all roet gant eur gristenez vad euz ar guær-ze.

Al listen digor e ti ar Aotrou Kerangal evit izom ar Pap a zao brema da bevarzec mil c'huec'h cant daou lur ha tregont. (14,632,32 c.)

Euz a ganton Plouigneau ez eus digasset er sizun-ma evit zouavet ar Pap 532 lur ; euz a ganton Riec 650 lur ; euz a ganton Kerhaes 510 lur.

Ar pez a zo savet dre ar Frans oll evit hon Tad Santel ar Pap, a ia brema tost da dri milion.

Ar re a zo carguet da velet ha great mad eo an hent houarn etre Castellin ha Landerne, a so en derveziouma o vizita an hent-ze. Cridi a eller eta e vezo digoret ar pennad hent-ze d'ar veachourien d'an derveziou kenta euz ar miz a zeu.

Atao, eme *Gazeten ar Meziou*, ez a an ed var gueraat e Frans, en Alemagn, e Beljic, en Holland, e Russi hag en Americ. E Brozaoz epken ez euz eun nebeut discar.

Ar pez a elfe lacat souezet eo ma zeo ar re o doa clas-ket brema ez euz eur sizuniou bennag lacat discar var an ed, a zo brema o lacat ar muia cresc varnezhan. C'hoant o deus, credabl, d'he zével ken huel, ma vezo red mad dezhan disken, hag eur vech comanset da zont en traon, ne ouzeur ket peur ec'h eano da zisken. Ne ouzomp ket ec'h alfent caout ken sonch nemet henez.

Al lotri evit ar vinoretz e ti an *Adoration Perpetuel* (ar Brovidans), e Kemper, a vezo tennet d'ar seiteg a vis kerzu da greisdeiz. Al lodennou a vezo laket da ziskuez epad an tri dervez diaraog, d'ar pevarzeg, d'ar pemzeg ha d'ar c'hoezeg.

Ar 14 euz ar miz ez eus roet e Kemper, e ti ar Prefet, priziou d'ar vistri ha d'ar vestretzet scol o deus diskuezet muia bolonte vad oc'h ober scol noz d'ar re vras.

Ar Pap en deus sonch da rei eur merk a honor d'an oll zoudardet o deus brezelekeat evit he zifen.

Cambr ar Sénatoret ha cambr an Deputeet, e Paris, so bet digoret dissul eus bet eis dez.

Mont a ra atao bandennou tud iaouanc da Rom d'en em lacat e servich ar Pap.

Brema e comzer calz euz a skenden person Ars, an den santel-ze a vezo douetus canonizet ep dale. Ar skenden-ze so bel sellet calz outhi epad an Exposition. An hini en deus great ar skenden en doa tennet kentoc'h he bortred; hoguen poan en doa bet oc'h hen ober. Person Ars ne felle ket dezhan, nag evit unan nag evit daou e vije tennet he bortred. Meur a beinter hag a skulter o doa clasket hen ober, hag oll o doa collet ho foan. Hema ive a voue casset en he dro dioc'htu.

Dre ali ar visionerien a voa en Ars, en em lakeas da heul ar person mad e kement leac'h ma zea, pa lavare an oferen, pa brezegue, pa rea ar c'hatekis, dreist oll pa her c'have o vont pe o tont d'he bresbital.

Eun dervez ma edo tost d'an Aotrou Vianney, hema a droaz outhan hag a lavaras!

— Asa ne velit-hu ket e lakit an oll da drei ho daou-lagad varnoc'h, ha me ive?

Ar skulter a iecas lent hag en devoa aoun o vont goude; mes ar visionerien a lavare dezhan mont ato.

Eun dervez all person Ars a lavaras dezhan:

— N'oc'h eus netra da ober-ta er gear?

— Oh! Aotrou Person! va c'has kuit a fell deoc'h?

— Nan, nan, chomit keit ha ma kerot, mes na rit ket ar pez a glaskit da ober.

Antronoz ar skulter o velet ar person e creiz eur vanden dud ha ne alle ket en em denna euz ho zouez, a iecas d'he gaout, a grogaz en he vreac'h hag a lavaras dezhan:

— Aotrou person, me fell din beza goard evit ho tional.

— Oh! Oh! evit an impalaer em c'hemerit? mes ne ket an dra-ze eo, m'em eus c'hoant d'hoc'h excummu-nuga.

— Pe seurt torfet am eus-me great-ta?

— C'hui a voar avoalc'h.

— Petra eo-ta?

— Ato em distroit dioc'h va labour. Guelomp, ha ne rafac'h-hu ket guelloc'h skulfa penn eur c'hi bennag?

— Oh! Aotrou Person?

Ar portred a voue tennet evelse gant poan, ha pa voue diskuezet d'ar person mad he unan:

— Sell! sell! emezhan, ne ket evol kent eur vascade-ren mollarjez eo. A dra sur, setu aze person paour Ars; ia da, lavaret a ve great e ve beo. — Gant eun tam coar eo en doa ar skulter-ze merket a nebeudou skenden person Ars.

Pa velit eur vanden soudardet o vont en hent (*eur regiment*,) e vez, mar oc'h eus sonjet, en ho fenn eur picol den, eur bonet blevek var he benn, hag en he zorn eur ganen o ren an taboulinerien. An den-ze a c'halver an *tambour-major*

En dez-all e voa eun *tambour-major* o tremen dre X... Eun tamig soudart, beac'h dezhan o caout ment avoalc'h evit servicha ar vro, a voa chomet en he za, he fri gant-ha savet en ear evit sellet oc'h ar picol den-ze e kichen pehini ne voa he unan nemet eur c'hornandon:

— Asa, major, evel kent c'hui so savet huel var ho killou.

Ar major a zao sounn he benn hag a gas he zorn da vlansonat an tamig baro en deus var he vuzellou; neuze e lavar gant eur min faeüs:

— Ia, blogorn, ne ket eur preonvic eveldot-te, sur...

— Mad, major, e Marseil, duman, ez eus c'hoas bras-soc'h evidoc'h!

— Brassoc'h evidon-me? Ha penauza reont neuze evit scrabat ho fenn?

E feac'h, major, respet deoc'h, en em lacat a reont var ho daoul'n. G. M.

PRIZ AN ED.

KEMPER. — 25 Du.		PONT-NABAT. — 24 Du.	
Priz ar c'hant tur.		Priz ar c'hant tur.	
Guinis....	46 lur, 75 c.	Guinis....	48 lur, 44 c.
Segal....	45 lur, 51 c.	Segal....	43 lur, 33 c.
Eiz.....	44 lur, 37 c.	Eiz.....	44 lur, 63 c.
Ed-du....	8 lur, 50 c.	Ed-du....	10 lur, 44 c.
Kerc'h....	40 lur, 29 c.	Kerc'h....	44 lur, 43 c.
Avalou-douar	5 lur, 50 c.	Avalou-douar	5 lur, 25 c.

Ar Gerant: AR. DE KERANGAL.

Kemper, moulet gand Ar. DE KERANGAL, Moullier an Escopti.

FEIZ HA BREIZ,

KELOU A BEP BRO, HA KENTELIOU VAR BEP TRA,

DIGASSET BEP SUL

Da guement Christen a goms ar brezoune.

Eun Abonnamant d'ar Gazeten a goust:

Evit eur bloas.....	DAOU SCOUBET.
Evit c'huec'h miz.....	EUR SCOUBET.
Evit tri miz.....	C'HUEC'H REAL.
Eur gazeten ebken.....	DAOU VENNEG.

Ar baonnamant a dle beza great araog caout ar gazeten.

ALIOU

Ar scrijou a ve c'hoant da lacat ar gazeten a dleer da adressi oll d'an Aotrou MORVAN, Beleg e Kemper.

Ar paonnamant a dleer da adressi d'an Aotrou SALAUN, ebken. An abonnamant a guemerer e ti an Aotrou SALAUN, librer, ru Kereon, e Kemper.

KEMPER, 7 Kerzu 1867.

Ar scrifagnerien difeiz a den dezho avechou santiman-chou mad, carantezus zoken. Er sizun dremenet edont o truezi da eur vere' hig pevarzeg vloas digasset dirag al lez-varn abalamour ma voa bet cavet oc'h asten he dorn, o clasc he bouet; hag ar scrifagnerien truezuz a ioa mantret ho c'halon o comz euz ar vere' hig paour-ze.

Ar vere' hize, ervez ar pez zo bet discleriet dirag al lez-varn, e doa collet he mam seiz vloaz a ioa. Tri buguel oant, hag ho zad a zemezaz adarre da eun intanvez hag e devoa ive tri buguel all. Ama e c'herruaz ar pez a erru aliez, al lezvam a voa criz oc'h he lez-yugale. Ar re-ma a voue red dezho en em denna euz a di ho zad pehini, gounezet gant he bried nevez, ho dilezas. Ar iaouanc euz an tri buguel-ze a voue diguemeret en eun ti-minoret. Chom a rea daou all, ar vere' h so hano anezhi hivio, hag eur map cossoc'h evithi. Ar map a c'hounezas bouet dezhan he unan ha d'he c'hoar epad eun nebeut amzer, mes ar zort o veza coezet gantha, eo bet red dezhan mont en hent, hag ar vere' hig ket so bet evelse dilezet e pep guiz. Neuze eo bet cavet var an hent evel eur vacabantez, hag eo bet casset dirag al lez-varn.

An tad a zo bet klasket ha kerc'het dirag ar barner; hoguen ne felle ket dezhan tam ebet kemeret he vere' h nag en em garga anezhi. Goussoude evel ma zoa eno tud euz he anaondeguez, ar re-ma a reas kement varnezhan ma c'hassantas eas he vere' h gantha d'he di. Mes ar barner o sonjal ne vije ket, credabl, gouzanvet muioc'h ar vere' h gant he lezvam evit na voa diagent, o velet ne felle d'he zad he c'hemeret nemet en despet dezhan, a zo falvezet dezhan gortoz pemzeg dez araog douguen ar varnediguez.

Esper en doa e vije cavet eun den mad bennag d'en em garga euz ar plac'hig paour. Hag e guirionez ne deo ket en em dromplet.

Ep mar, a leverot-hu, p'eo guir ar scrifagnerien vad-ze o doa kement a druer oc'h ar vere' h kez, unan bennag

anezho a vezo digoret he galon, hag en devoa goullennet en em garga anezhi! Han ia! lenner, ita da glasc an dra-ze digant tud ha n'o deus na feiz na Doue! Eun den ep feiz n'en deus ken Doue nemethan he unan, ne gar nemethan he unan, n'en deus vad da ober nemet dezhan he unan. Evit scrifa eur guer bennag da ober neuze da gaout truez oc'h an dud reuzeudig, an dra-ze a raint avoalc'h, rag, an dra-ze ne goust nemet dezho, hag an dra-ze a ell ho lacat da dremen evit tud madelezius. Dionezet avad eun dra bennag gant ar re izomeg, ranna ho zra gant ar re so en dienez, na c'hortozit ket kementse digantho; ho madalez ne da ket bete keit-ze. Evit dionezet he dra gant ar paour, evit en em zieza dre garantez evit an nessa eo red caout feiz, eo red beza christen, hag ama ive eo eur gristenez vad e deus digoret he dor d'ar baourez kez a ioa dirag al lez-varn. Eun demezel a zoujans Doue, ha din a respet dre he oad ha dre ar vad e deus great, eo a zo deat da c'houlenn en em garga euz ar vere' hig. An demezel-ze e deus roet he danvez ha savet eun ti evit diguemeret ar merc'hedigou-ze a gaver ker stang er c'herion braz var var da goeza en dizurs ma na deufe eun dorn carantezus bennag d'en em asten dezho. Evit an dud difeiz, hirra a reont peur liessa evit mad an dud reuzeudig, eo lavaret eur guer bennag evit truezi dezho; comzou ha netra ken!

Ar re vraz euz a Rom a guemer gant prez tud goulliet en ho zi evit kemeret soursi anezho. Ar brinsez Oldescalschi e devoa kemeret unan, hag a c'houlenn eun all. Sonjal a rejot eas dezhi eur zoudard iaouanc euz ar Perou a zo en hospital hag azo goulliet e pemp leac'h. Mes hema pa voue discleriet an dra-ze dezhan, a c'houlennas:

— Ha bez'em bezo eno an oferen bemdez?

— Nan, a voue lavaret dezhan, mes bez'evit en eun ti mad ha christen eleac'h ma vezo pep soursi ac'hannoc'h.

— Oh! emezhan, ma n'am bez ket an oferen bemdez me zo guell ganhen chom ama! — Hag eo chomet

en hospital. Setu aze eur gventel da guen aliez a zen hag a elle caout an oferen bemdez ma carfent, ha ne deont ket dezhi !

An Tad Santel, evel ma on eus lavaret kentoc'h, a ia he unan da velet ar zoudardet gouliet. Mont a ra d'ho c'haout; ho zrugarecat a ra, ho benniguen, lacat he zaouarn sacr var ho fenn, ha rei dezho mil merc a garantez.

Etouez ar re zo bet gouliet e reug he enebourien, e cavaas daou, e sellaz a druez outho, hag e tasteaz oc'h unan anezho en eur lavaret :

— Den iaouanc-kez, sonjit eo eun amzer a drugarez en deus roet Doue douc'h oc'h ho tigas ama. Goulennit pardon-outhan, trugarecat-hen, ha sonjit ive pa skuizer he drugarez, e teu mare he justis.

An den iaouanc, teneret he galon o velet madelez ar Pap, en em lakeas da vouela, ha da lavaret :

— Pardon, pardon, Tad Santel. Me n'ho c'h anaien ket; ne vounen ket petra a rean. Benniguit ac'hanon.

Ha Pii Nao' her bennigas.

Etouez ar vretoued gouliet en abadennoù diveza e ser- vich hon Tad Santel ar Pap, e verket er sizunioù all hano an daou zouav, Quere euz a Blouvoan, ha Crec'h euz a Gastel-Paol. Er sizun-ma e scrifer deomp euz a gouent Langonet, evit rei deomp da c'houzout ez eus maro ive eur breton all, lazete var dachen ar vrezel. Ar breton-ze so he hano Jafrennou, guinnidig euz a Huelgoat. E couent Langonet edo pa falvezas dezhan, e miz ebrel diveza, mont en hent evit en em lacat e ser- vich ar Pap. Gantha e tiblasaz ive eur mignon dezhan a ioa evel dhan e Lan- gonet, eur breton all hanvet Tanguy, euz a Sant Evarzek. Hema en deus digasset ar c'helou euz a varo he vignon, hag he lizer, scrifet euz a Rom, a so etre va daouarn.

Jafrennou so coezet, tizet en he benn gant eur voulet pehini, goude beza treuzet eur zoudart all, e devoue c'hoas nerz avoalc'h evit laza an den iaouanc-ma. Hoguen ama ne ket d'an hini maro eo e truezer : an hini so cho- met heo eo a huanad o velet eurusdet he vignon.

Ne ket etouez ar zoudardet breton epken eo e caver ar santimanchou-ze. Eun ofiser a vro c'hall a lavare :

« Ep mar e ranke beza etouez ar zouavet, ha dreist oll etouez an hollanted, tud hag a glasse gounit ar guru- nen a verzerinti. An dra-ze a lennet splam en ho zellou ha zoken en ho bale.

Ar Pap a gomze evel en dez all oc'h ar goardou a Rom :

« E creis kement a drubuilhon evel so en dro deomp, e touez kement a nec hamanchou evel a zigas deomp an droug-speret. trubuilhon ha nec hamanchou hag a zo guelloc'h lavaret eur guer epken anezho en eur dremen, eguet en em asten var bephini anezho, ez eus daou dra hag a zo eul laouenidiguez vraz evidhomp ho guelet hag ho c'hlevet, daou dra hag a laca souezet an Europ oll, me lavarners-calou hor soudardet ha fidelite ha r sujidi. »

« C'hui a so var eun dro soudardet ha sujidi ; sujidi ato, ha soudardet pa vez izom »

« Ra vezo eta benniguet an Aotrou Doue, dre ma kemer truez oc'h hon trubuilhon, ma ro sicour deomp pa hor guel diners, ha ma n'ho les ket da eva beteg al li ar c'halir c'hoero euz hor poanion. He bidf a ran d'ho carga euz he c'hrasou. Ra gavot etouez ho tud ar garan- teza ziskuezit din. Pidi a ran Doue da scuilla varnoc'h he vennoziou ha d'ho kenderc'heler santimanchou oc'h eus diskuezet en dervezion-ma. Ra deui Doue eta d'ho penniguen en ho corf, en hoc'h ene, en ho madou, en ho poanion, en ho labourou, evit goude beza bet benniguet gantha ama var an douar, ma her bennigot ive ato en Env. »

SMYRN. — Unan euz a c'hoarezet Sant Visant a Baul, o chom e Smyrn, a scrif d'he c'hereut a so o chom e Naonet :

Ar vad a reomp ama a ia ato var gresc. Bez'ez eus brema ganeomp vardro pevarguent minorez, ep conta ar botredigou. Bez'on eus vardro cant merc'h, bugale d'an dud vella ha pinvidica euz ar c'harter, hag a so maguet ha lojet en hon ti; neuze ez euz ouspen tri c'hant hag a ia hag a zeu d'ar scol. Hor c'hlandi so ato leun, ha rei a rer enha digemer da dud euz a guement relijion so dre ama. Ar gatoliked a gar ober vad d'an oll.

Bez'on eus var ar meaz eun ti eleac'h ma saver ar vugaligou vihan. Hoguen kement eo cresket an niver anezho, ma ne voa mui a blas d'ho lacat; red oa sevel tiez nevez. Ar chapel ive a voa re vihan. Mes n'on dba na peadra, na den d'eu em garga a guementse. Doue zo deut d'hor sicour. An amiral Simon, keit a ma zeo bet ama gant he lestr, en deus lakete he vartolodet da labou- rat, hag ar re-ma o deus savet eur chapel ha ne deo constel netra deomp. Benna Doue dezho. Evelse mar- tolodet ha soudardet Frans a ra vad e kement leac'h m'en em gavont.

Ne allan ket miret da verca ama c'hoas pebez ners calon en deus diskuezet eur zoudard-all euz ar vro ma var dachen ar vrezel. Eur zouav iaouanc, Eozen Quatre- Barbes, a ioa bet tizet ha discaret gant eur voulet. Eur c'hamarad dezhan, oc'h he velet coezet, a redaz evit he zevel. Mes Eozen Quatre-Barbes a zao he vrec'h leun c'hoad, hag a lavar : *Bevet Pii nao ! an dra-ma n'eo netra ! it atao, ha list ac'hanon-me !*

ANNEY. — Tadou couent Sant Bernard o deus, en dervezion tremenet, saveteet he buez da eun itron a veache dre ar menezioù huel, ma eo savet ar gouent-ze var ho c'bern. Eur beacher hag he c'hreg a deue euz a Aost. Kemeret o doa tud d'ho hentcha, hag ho zouch oa digouezout er gouent arag an noz. Mes dont a reaz eur goal var arneu varnezho epad ma kerzent var ribl eun toul islong scrijus. An itron a ioa strafuillet, a goezaz hag a ruillaz n'islong. An hentcherien a ias buban d'ar gouent, hag an tadou a deuas dioc'htu gant eur c'hi da

glase ar veachourez collet. An oll a voar o deus tadou Sant Bernard chas braz savet gautho ha deskete da vont da glase an dud dianket pe troet divar ar guenojennou zo eno goloete a erc'h. Ar c'hi-ma, kerkent ha m'en doa cavet roudou ar veachourez, a ziskennas dioc'htu beteg enhi, hag en em lakeas da harzal ken na voa diskennet tud d'he c'herc'hat. An itron so goal lakeate o coeza eno, mes esper zo e chomo heo. G. M.

Scrifa a rer deomp euz a Guemperle :

AOTROU KER,

Kaer eo ar peza a lavaret d'omp, bep sizun, divar hen hon Tad Santel ar Pab ha divar hen e zitenourien nerzus ; ho len a reomp gant kals a blijadur.

Plijadur a ra d'omp ive guelet e teu an oll dud fidel eus hor bro da bedi nos-deiz evit ma plijo gant Doue asten e zorn galoudus da harpa an Iliz hac ar Pab ! Coulsoude ar peza ra muia plijadur d'hor c'halon eo guelet an aluzennou a roont oll en hevelep intantion ; Rae guir sur eo n'eus moyen all ebet da savetei Iliz Jesus-Christ en amzer fall-mâ. Pell bras a so ho divije an dispac'herien discred eus an Itali lakeete ho zreid sacrilaich e Rom hac ho daouarn var ar Pab, pe e gasset da vale, peneverte aluzennou ar Gatholiket a bep bro, stard en ho feiz.

Dre an dienez hac ar baourentez eo o doa sonjet dont a ben eus Pie IX ; a ben da ziskar kador Sant Per, ha dazistruja tre e iliz. C'hoas irio, eb hon aluzen, nan, bir- viken n'ello ar Pab chom er guær a Rom, stard var e dron. n'ello ket kaout soudardet d'en difen, na tud goueziec en dro deza de sicour en oll deveriou en d'eus da ober evit gouarn mad an Iliz.

Kassomp eta, kassomp d'ar Pab hon aluzennou ! hi a savetao anezâ ; a savetao an Iliz, hac a elloive martreze ober eun dra benac evit hor silvidighez hon unan !

— Parrezie Itron-Varia-Kemperle e d'eus savet, en dion sizun divezâ, tostic da seitek kant lur (1700 l.) evit hon Tad Santel ar Pab.

Disale an argant-se a vo kasset d'an Aotrou n'Escop, pehini a lavaro c'hoas eur veach me zo sur :

« Diou berlezen gaer a so staguet ous va c'hurunen a Escop, Kemper var Odet ha Kemper var Elle. »

X.

HISTOR ZANTEL TENNET DIVAR LEVR ANW EXOD.

(PEVARE PENNAD VAR-N-UGHENT).

Azeulerien al leuc aour Kastizet. — (EXOD XXXII.)

Moïses, goude beza great d'ar bobl lounka he Zoue aour, m'hen ergarzi a lavaraz da Aaron : petra en deuz great ar bobl-ma d'ehoc'h, ma hoc'h euz tennet varnezhan eur pec'hed ker braz ?

Aaron a respontaz d'ezhan : drouk na vezet gan-ehoc'h, va Aotrou, rak annaout a rit ar bobl-ma, ha gouzout a rit peghen doughet eo d'ann drouk. Lavaret ho deuz d'in gra d'omp doueou hag a gherzo eun hor raok ; rak ar Moïses-ze pehini en deuz hon tennet euz a zouar ann Eijp, n'ouzomp ket petra eo deuet da veza. Hag em euz lavaret d'ezho : piou ac'hanoc'h en deuz aour ? Hag ho deuz di- gaset ha roet aour d'in. Hag em euz he daolet eun tan, hag eo deuet al leuc-ze anezhan.

Neuze Moïses, o velout edo ar bobl evel e hoaz da lavaret eo, kollet gant-han bobl zikour Doue, a zavaz, hag oc'h en em zerc'hel e toull-dor ar c'hamp, e lavaraz : mar'z euz unan bennag, c'hoaz a dugant ann Aotrou, ra zeuio ama en tu gan-en ! Hag holl vugale Levi en em zastumaz endro d'ezhan. Hag e lavaraz d'ezho : setti ama petra a lavar ann Aotrou ; ra laban pep goaz he glaze oc'h he gostez ; it, ha deuit euz ann eil dor d'ebit dre greiz ar c'hamp, ha ra lazo pep hini he vreur, he vignon hag he gar tosta.

Bugale Levi a reaz ec'hiz ma en devoa lavaret Moïses, hag e oe lazete eun deiz-se var dro tri mil den var-n-ughent.

Ha Moïses a lavaraz da vugale Levi : birio hoc'h euz konsakret ho taouarn d'ann Aotrou, heb unan var he yap ha var he vreur, hag hoc'h euz tennet he vennoz varn- hoc'h. (C'houi vezo meuriad sacr ann Aotrou Doue ; he veleghiez a vezo enn-hoc'h.)

Antronoz Moïses a lavaraz d'ar bobl : eur pec'hed braz meurbed hoc'h euz great ; pignat a rinn da gavout ann Aotrou, da velout ha me a hello kaout trugarez evit ho koall-ober.

Ha Moïses, o veza distroete da gavout ann Aotrou, a lavaraz : selaouit ac'hanoun, me ho ped ; ar bobl-ma en deuz great eur pec'hed braz meurbed, great ho deuz evit-ho doueou aour ; mes pardounit d'ez-ho ar faot-ze, pe mar n'her grit ket, effacit ac'hanoun divar al levr hoc'h euz skrivet (ar peza zo : lamit digan-en ar vuez.)

Ann Aotrou a respontaz d'ezhan : ann hini en devozo pec'hed euz enep, hemez a effacim divar va levr. Evid- hoc'h-hu, it, ha kassit ar bobl-ma d'al leac'h am euz la- varet d'ehoc'h. Va Eal a gherzo a-raoz-hoc'h. Hoguen, da zeiz ar venjanz, me gavo ar pec'hed ho deuz great.

(Goude beza guelet Moïses o st'ei he bobl, hervez al lezen a oa gant-ho enep azeulerien ann dougon, fag- guelit gant estlam he garantez evit-ho. O va Doue, emezhan, pardounit d'ezho, pe effacit va hano divar ho leor a vuez ! Netra na harz ouz eur bed-en evel honn-vez. Doue a espern ar bobl, n'hen distrujo ket. Koulskoude roet en deuz eur gventel spoutuz, o lakat d'ar maro var ar plas tri mil var-n-ughent anezho. Ha divezatooc'h e kavo c'hoaz ann tu da vizita ho lec'hed, rak he justis a renk kaout he guir. Follentez eo eta pec'h, pa renker abred pe zivezad damanti.)

Neuze Doue a lavaraz da Moïses : it, ha pignit diouc'h al leac'h-ma argaruz evid-oun, d'ar vro divarben pehini em euz touet da Abraham, da Izaak, ha da Jakob, o lavarout : he rei a rinn d'ar vouenn ac'hanoc'h. Me gasso eun Eal da gherzet eun hor raok ; rag ne bigunni ket

va-unan gan-ehoc'h, dre ma'z oc'h eur bobl penn-kaled, gant aoun n'ho tistrufenn var ann hent, dre'n abek da eun dizentidighez bennag c'hoaz euz ho perz.

Ar bobl, o klevout ar gomz c'honoro-ze er em-lekeaz da ouela, ha nikun na viskaz evel kent he zillad kaer, evit diskouez ho c'heuz hag ho glac'har.

Moïzes ivez a lamaz ann tabernakl euz a greiz ar c'hamp saotret gant prezanz al leue aour, hag hen zavaz er meaz enn eul leac'h all hetussoc'h da Zoue, hag hen hanvaz tabernakl ar ghevredighez. Eno e roe Doue he urzou hag he alioù d'he zeryicher; hag ar re ho divije eun dra bennag da c'houlenn a iea er meaz euz ar c'hamp da dabernakl ar ghevredighez. (Siouaz ! Siouaz ! Kement-ma a c'hoarvez aliez gant ar broiou kristen, pa en em c'hreont indign euz a vadelezoù Doue. Doue a zeu da lemel digant ho sklerijen ar vir feiz, hag he ro da bobladou all sentussoc'h, pere a denn muioc'h a brofit anezhi.)

Pa'z ea Moïzes d'ann tabernakl, ar bobl holl a zave, ha peb-unan en em zalc'he en he zao var doull dor he deli, hag e sellent ouz Moïzes a-dre he ghein, ken na vije eat ebarz enn tabernakl. Pa vije eat Moïzes enn tabernakl, ar goulounen goabr a ziskenne hag en em zalc'he dirag toull ann or, epad ma vije Moïzes o komz gant ann Aotrou Doue. Ann holl a vele ar goulounen, ha keid ha ma chonme eno, hi en em zalc'he ho-unan e toull doriou ho zeltou, hag ec'h adorent ac'hano. Hoghen ann Aotrou a gomze ouc'h Moïzes drem-oc'h-drem, evel ma kustum eun den komz ouz he vignon. Eur veach e lavaraz d'ezhan : hoc'h anaout a rann dre hoc'h hano. (Komz hag a ziniñ ebarz ar skritur, eur garantez vraz am euz evid-hoc'h.) Ha Moïzes a lavaraz da Zoue : ma em euz kavet gras diraz-hoc'h, en em ziskouezit d'in, evit m'hoac'h anavezinn; ha sellit enn ho trugarez ouz ar vroad tud-ma, ho pobl.

Ha Doue teberet gant peden he vignon braz a lavaraz : ma, kerzet a rinn c'hoaz va-unan en ho raok, hag ehan a roinn d'ehoc'h; da lavarout eo : dijat a hellit beza e kreiz hoc'h enebourien, me vezo ho tifenour. Hoghen na hellit ket guelet va fas; rak den na oufe guelet ac'hannou ha chom beo. Mes, eme Zoue, eul leac'h a zo, e pelec'h emañ, en em zalc'hit eno var ar mean, me ho-koloio gant va dour deou, ken na vezinn eat ebrou. Neuze me denno va dour, hag e velot va c'hein; mes va fas na hellit ket he velout. (Al leac'h-se, eme Zant Augustin, eo Iliz Doue; ar mean eo Jezuz-Krist. Mar fell d'eomp anaout Doue, selaouomp kelen ann Iliz, dalc'homp hor zell var Jezuz-Krist, lennomp he vuez, studiomp he Aniel; eno e velimp eun dra bennag petra eo Doue, eno e velimp he furnez, he c'halloud; he vadelezoù, ha ho gont.)

BUEZ SANT VISANT FERRIER.

(PEVARZECVED PENNAD.)

Visant goude beza lavaret kenavezo d'ar bobl bodennet en dro d'he vele, a c'houlennaz chom e-unan,

evit caout mui a ze a amzer da bedi ha da n'em brepari d'ar maro. He boannou a gresc'az calz; mez dre ma creskent, he basianted en-ho a greske ive. Kement a vije var he dro, ha dreist-oll ar vidisined a voue sebezet-maro, o velet ec'h alje eun den souden poaniou ken garo eb en em glem. Pa vije ar vidisined oc'h ober ar guiguerrien var he gorf santel, ne glevet o tont euz he c'hinou nemed an chanoiou Santel a Jesus ha Mari; ha pa vije o kemer eul louzou bennag, e clevet ive anezhan o rei melendi da Zoue.

Er mare-ze ne voa er gear a Vened, couent ebed euz a urs Sant Visant : hoguen, dre ma vouiet ervad e vije eun disput pe eur rendael vraz goude he varo evit gouzout piou hen dije he gorf, e voue casset d'he gaout tud euz ar pennou huella a gear, evit clevout he ali var guement-ze. Visant a lavaraz d'ez-ho : « ne d'oun nemed « eur paour-kez rilijuz : servicha Jesus-Christ, setu ar « vad ebken a gavan en-hon : ne glascan netra nemed « silvidighez va ene : ne ran fons petra vo great euz va « c'horf goude va maro. Cousgoude, dre ma fell d'inte « reufe bepred ar peoc'h en ho touez, e corgan ar rilijuz « jiu a zo e penn tosta couent a zo da Vened, da ober « goude va maro, ar pez a garo gand va c'horf. » Na devez goude e c'houlennaz ma vije lennet d'ez-han Passion Jesus-Christ, ervez ar pevar avieler. Goude e reaz lenn dirazan ar seiz psalm a binijen hag ar psalmou all pen-da-ben, ha dre m'ho lennet d'ez-han, hen-e-unap a lavare ive a c'hinou ar pez a gleve da lenn etre ma padaz he nerz. Goude e croajaz he zaouarn, hag o veza savet he zaoulagad var zu an env, e ro he ene caer da Zoue, d'ar merc'her, 5 a viz ebrel 1419, d'an oad a drizec vloaz ha tri-ugent.

An duguez a Vreiz, a falvezaz gant-hi goalc'hi ar c'horf maro. Lacat a reaz a gostez an dour a vele baz ar c'horf : hoguen an dour-ze pell da zont gand an amzer da vreina, a roe bepred eur c'houez vad evel an dour ar fresca. An dour-ze e deuz great da c'houde meur a viracl o rei ar iec'hed d'ar re glanv. An dug, Ian V a n'em gargaz da lacat ar c'horf er bez; mez kement a dud a deue a bep tu da velat ha da stog out ar c'horf, m'a voue red mad hen lezel var ar varv-seaon epad tri devez. Red e voue zoken lacat soudarded da zivoual an den maro, pe vije eat ahanou tam-ha-tam gand ar bobl. Epad an tri-deiz-ze, ar c'horf na guenteraz tam hon an douar ha ne losc'az tam fler. Euz he velat, e vije lavaret e vije c'hoaz leun a vuez. En devez, e voue beziet e corn an aoter-vraz, en iliz catedral, hag eho en deuz kendalc'het da ober kement a viraclou goude he varo, evel a reaz epad he vuez.

Kerkent a m'a voa eat a bell ar brud euz maro Visant, ar rouanez hag ar pennou holl euz ar broiou m'hen doa ar zant prezeguet en-ho, a skrivaz d'ar Pab Martin V, evid hen pedi da lacat e renk ar zant, missionner braz Breiz-Izel. Nicun na ziskouezaz kement ar c'hoant-ze d'ar Pab, evel Ian V, Dug a Vreiz. Martin a sellaouaz ar pedennou great d'ez-han; mez an iliz a c'houarne, e doa neuze calz aferiou diez var he divrec'h, hag a lezaz a gostez ar pez a zelle euz Sant Visant. Ar rilijuzed euz

he urs zoken, a deuz da ienad, o velet ar brinsed hag ar rouanez oc'h anaout he ban discleriadurez a Zantelez Visant. Eujen IV o veza deut da c'houarn an iliz goude maro Martin V, a falvezaz d'ez-han ober ar pez zo red evid an discleriadurez-ze, me beza ioa neuze eun den fall var an douar hanvet Amedee; hag a roe calz trubuil d'an iliz dre ar falz creden a ade e pep bro dre he gomzou ha dre he scriidou, hag ar Pab nevez a raneaz lezel adarre discleriadurez a Zantelez Visant a gostez. — Goude maro ar Pab Martin, Calixt III a deuz da azeza var cador Sant Per, hag a ziscleriaz Sant ar missionner braz Visant Ferrier, er bloaz 1458. Digoret e voue neuze ar bez, ha calz ilizoù a Vreiz a deuz c'hoaz euz relegou ar zant.

Diez e vefe niveri ar miraclou c'hoarvezet e Breiz dre vertuz relegou ar zant, braz-mañ. Hoguen galloud ar servicher-man da Zoue n'eo ket biannet en Env. En em erbedomp eta d'ez-han, hag e velfomp peguen crenv eo nerz eur zant. Baleomp ive var he roudou; greomp, ervez hor galloud, ar pez en euz great. Visant a zilez he vro, he guerend hag he anaoudeghez, evit dont e Breiz da zeski d'ar bobl ar pez na c'houie ket, an hent euz an Env. Hoguen, nag a dud eb descadurez christen ne guerver ket c'hoaz hirio e Breiz-Izel ! Evit beza henvel euz Visant Ferrier, n'hon deuz eta nemed deski ho fedennou, ho c'hatekiz d'ar vugaligou-ze, n'ho deuz den d'ho c'helen na d'ho c'hentellia var an douar. Bezomp tad d'an emzivad ha d'an dud-ze eb descadurez christen, ha neuze pa den Doue d'hon guervel euz ar vuez-man, e caffomp eun alvocad gallouduz e Sant Visant Ferrier ken brudet e Breiz. BODEUR.

AR MESSAER BERTELE.

(DECVET PENNAD.)

Bertele hag ar pevarzeg all a voa gantha er vag vihan var ar mor bras, ne voant ket ep enez. An avel a ioa sionleat, evit guir, hag ar mor a ioa deut da gompezi; hoguen ne vouient ket pelec'h edont, hag ho sturier, evel ma on euz he lavaret, ne vouie nemeur he vicher. Pa en em gaver evelse var var da goll ar vuez e teu sonch a Zoue, ha zoken d'ar re n'o deus nemeur a zouch anezhan e mare all. Kement hini a ioa var ar vaguik-ze a bede Doue hag a bede calonek, hag ar messaer bihan ne voa ket an diegussa o pidi. Ho feden a voue selaouet.

Goude m'o doa tremenet daouzevez hag eun nosvez e creiz an drubuil-ze, hag ec'h eller lavaret etre ar maro hag ar vuez, an ezen a zigasas dezho eur c'huez mad, eur c'huez hag a die dont euz an douar, hag ar vartolodet en em lakeas da grial dioc'htu : Douar ! douar ! hag abenn eur pennadig goudeze e veljont eun enezen dirazho.

Ar sturier a zavas neuze buez enha, hag a renaz ar vag etrezeg an aod. Hoguen aoun o devoa c'hoaz na dajent da steki ec'h eur garrec ha da ober pense e kichen an

douar. Mes pa voant eat tost e caffont eun vad ebken, var elc'ac'h ma pouljont ho bag ha ma c'heljont douar ad dizanjer. Edont en enez al lapinet.

Kenta a rejont oll e voue mont d'an douar da drugarecat Doue da veza ho zennet euz eur maro serijuz, ha da veza roet dezho ar c'bras da gaout adarre douar diudan ho zreid. Hoguen e pe seurt douar edont ? Ha bez edont en eun enezen didud ? Ha digouezet oant-hi etouez tud gouez, e touez douerion tud ? Kement-se a irea c'hoas nec'h dezho.

Da guenta e credjont ne voa den en enez-ze, nag o veza eat eur pennadig dioc'h an aod, e veljont o lec'h en en, ho raog eur vanden loenedigou, coant, sounn ho dioucouarn gantho, hag a seoc'h stang ha m'hoac'h ho faigou her en douar; en eur guer eur vanden couciet pe lapinet e voant, ha ne ket eun douerion hag eun hanter eo a ioa anezho, mes meur a vil, Ker stang hag ar c'hilleien raden pa ziskennont var eur vro d'he distroja.

Hor martolodet n'o doa ket c'hoarzet pell a voa; hoguen neuze e rejont eun abaden c'hoarzin o velet al loenedigou-ze o lamet ama hag a hont, er mor, ha zoken etre ho divesker, rag lavaret e vije ne voant ket boas da velet tud; ha setu perag ive ar vartolodet a zontas ne voa ket a dud en enezen.

Pardaez oa pa zouaraz ar vartolodet en enezen. Ker scuiz oant ma en em lakejont dioc'htu da gousket, o lezel beteg antronoz vintin peb souer, all, petra bennag ma o divije caret ober eur frigoussen gant kig unan bennag euz al loenedigou-ze a velent stang evel merien en dro dezho. Abarz eur c'hard heur goude e voant oll o roc'hat bele teleur ar strafuil etouez ho amezelen al lapinet. Rag ar re-ma, var a leverer, ne gouskjont ket en noz-ze. Destumet en ho zoullou e tremenjont an noz o cuzulat, oc'h heja ho dioucouarn, o scrabat ho fri, o clasc gouzout, credabl, petra rajent oc'h an estren-ze dent evelse a drouc'h franch en ho mest ep ma voa nicun e gortos dezho.

Antronoz Bertele ha tri vartolod euz ar Spagn a ioa etouez ar peuzeg o doa douaret en enezen, a voue da guenta var zao. Evel ma voa c'hoas c'ousket e loek ar re all, ez ejont ho sevar da ober eun dro Gabiten al lestr, araog ma voa eat ar bagou diouthan, en doadaket e pep hag ken aliez a fuzil evoll ha zem. Evelse ar pevar ma a guemeras pep a lazilhag eun nebeut poull ha draje.

An tri vartolod a lakeas Bertele sendho d'ann enezen, ha m'hoac'h doa eun tam descadurez hag hini o doa den. Ouspenez Bertele, petra bennag ma neomp ar messaer bihan anezhan, ne voa mui eur bugnel; savet oa d'oc'h aners dezhan, ha guest oa brema d'en em denna e pep leac'h.

Setu eta ar pevar ma o vont da vale dre an enezen. Lapinet a gavent a vandenou; mes ne velent den. Gouscoude pa voant eat eur pennad e caffont, oc'h eur seour guezen, tri pe bevar groc'hen lapin, laket da zec'ha.

— Oh ! oh ! eme Bertele, ama ez eus tud eun tu

bennag : rag ne ket credabl e ve gouezieg avoale'h al lapinet evit en em guignat evelen an eil eguile, na criz avoale'h evit lacat erc'hign ho breudeur da zec'ha oc'h scourrou.

Tro var dro dezho ez oa guez palmez, ha lod euz ar guez-ze a ioa luel meurbet. Ar messaer a lavaras d'he dri vartolod.

— Loscomp hon tennou hor pevar var eun dro, ha mar deus tud gonet ama a dost eun tu bennag, e vezint guelel, ep mar, o tiscampa pe o tiskuez ho fri.

An tennou a voue losket, ha kerkeut e clefjont eun tousmac'h ha ne vouient ket cals a beleac'h e tene. Sevel a rejont ho daoulagad, hag e veljont o sellet outho euz a veg ar guez palmez, a douez au deliou hag ar scourrou, eun toullad pennou ha ne voa ket ez lavaret pe bennou tud oant, pe bennou marmouzien vras. Ho drem, ho liou hag ho bleo ne roent nemeur da anaout petra oant. Chom a rejont da zonzal, hag ep dale e veljont unan o-tisken, evel eur gouiber pe eur c'has coat a hed tronjen eur vezen. En eur momet en em gavaz en ho zouez.

Souezet e vouent pa veljont oa hema eun den evelo, ha souezetoc'h c'hoas pa her c'blefjont o comz outho e iez Spagn. Eun den coz oa, he varo hir ha guenn, en hevelep doare ma vije bet gantha sae eur manac'h, o divije dioc'htu he guemeret evit eur c'habucin. — Ar c'hannadour a lavaras dezho :

« Me a zo ama antercant vloas zo, hag evel a velit, em eus beac'h o comz e iez va bro, keit a zo n'em eus ket he gomzet. An enezen-ma a zo hanvet enez al lapinet, hag an dud so enhi a rer lapiniz anezho. Debrerien tud int; mes ken dieguz int ive ma zeo guell gantho caout naonn evit mont da ober ar brezel d'al lern ha d'an ouidi ho amezeien evit caout prizonierien da zibri. Evelse ne zebront a dud nemet ar re a vez taolet ama dre bense eveloc'h. C'hoaz ar re o deus calon hag a voar en em zifen, a ell beza espernet gantho. Me a zo chomet va buez ganen evelse, dre ma rean aoun dezho gant va fuzil, rag me zo bet taolet ama ive dre eur pense. O velet oan den da verza ker va c'hroc'hen, o deus va c'hemeret en ho zouez. Hoguen brema oun dent coz, hag em eus aoun na skuissent ganhen, ha n'am lacafent oc'h ar ber. C'hui, a drugare Doue, a so digouezet e mare evit va zavet e.

Al lapiniz a vanc tri zra dezho, enonet int, ha n'o deus den d'ho dizeou : clau int meur a hini anezho gant terzienou pe boamou all, ha n'o deus den d'ho louzaoui; donjer o deuz oc'h ar c'hig lapin, ha gouscoude n'o deus ken da zibri, ha n'o deus den d'he bourchas dezho evel m'eo diet. Ma ve eta unan bennag ac'hanoc'h hag a elle rei eun tam ebat bennag dezho, hag a onfe ober eun tam louzou pe eur simillerez bennag, hag a oufe an doare da ober eun tam frigonsen, hennez a ve laket gantho da roue; mes ma na ouzoc'h ket an traou-ze, ne ouzon ket penauz ez ai ar bed ganeoc'h. Cridi a rau e raint ho tro evit gallout chench eundu eun dervez bennag. »

Setu aze prezeguen ar c'hannadour. Bertele ne jomas ket da varc'hata, « it, emezhan d'ar spagnol coz, it d'ho glud da lavaret d'al labouset displun-ze ema ama guella keguiner ha guella louzaouer so er broiou a bell, ha mar deo ebatal a fell dezho, e vezo cavet marvailou da zistaga dezho kement hag a garint. »

Ar c'hannadour a gripaz adarre evel eur c'haz beteg ar c'hud, evel ma lavare Bertele, hag a zistroas trum gant ar respont-ma :

— Diskuezit deomp ha c'hui a voar ober ar pez a livirit; mar her grit, e viot roue; ma n'her grit ket, e viot debret. G. M.

AN DAOU LOUARN.

Daou louarn, an tad hag ar mab,
Rederien noz euz an dibab,
Paotret difeis g'his Kemener
A ieas dre noz eun eur glud-ier.
Kiltog hag iar, heb chipotal,
E berr goumsou hag heb trouchal
Zo diskaret, dic'hoadet,
Displuet pis, divouzlet.
An toullou lerr a zo naounek;
O daou rak-se e trebfont c'huek,
Eghis bleizi var ho goassa,
Hag heb doare da beana.
Assa, mab ker, eme n tad koz,
Keau vad hon deus kavet henoz,
Bennoz, meulendi da Zoue
D'or bea boetet er ghis-se.
Mæs bezomp fur, eun eun dervez
Ne loukomp ket hon oll danvez :
Varc'hoas vo deis, bev nep a c'hell,
Espernomp pe vo red mervel,
Kals traou em bue hem bens guelel,
Va skiant dre-ze e deus kresket;
Ia, pinvidik er penn kenta,
Paour a varvo, ma n'espern tra,
Bah ! eme'r mab, kik-iar zo ker,
Drebomp eta p'hellomp ober;
Evit eis de me a louuko,
Pe o tribi me a grevo;
Rak n'hem guelloc'h er c'hraou-ma
Na varc'hoas, nag er bla-ma;
Ozac'h ha greg gant ho bisier
A brisfe re killog hag iar.
Setu ta'r mab var he c'hoassa
O lounka, oc'h en em garga
Ken ne hellas gand he gorvad
Mond da vervel enn he goat.
Guelloc'h an tad a gred ober
O kuzat lod c'has ar vogher,
Mæs an ronoz pa z s ioas
E one lac'het a daouiou baz.
Dre ama oll hon deus techou,

O c'bastizomp dre ho louzou
Pe gant-ho prest e veimp kolle
Rag hi pe ni vo sur trec'het.
Te, den koz zo re uzuiller,
Te, den yaouank, re zispigner. O. Hellec.

Hano ar Zent evit ar Sizun-ma.

DILLUN, 9 Kerzu. — Conception didach ar Verc'hez Vari.
DIMEURS, 10. — Euz a eisvet ar goneption didach.
DIMERC'HER, 11. — Sant Damaz Pap.
DIZIQU, 12. — Sant CORINTIN kenta patron an escopti.
DIRGUENER, 13. — Santez Lucia, guerc'hez ha merverez.
DISSADORN, 14. euz a eisvet Sant Corintin.
DISSUL, 15. — Trede sul euz an Asvent.

An Abostol hirio :

Va bread'ur, En em laouenait bepret e Doue : he lavaret a ran c'hoaz eur vech ; en em laouenait. Ra velo an oll ac'hanoc'h o ren eur vuez dereat : Doue a so tost. N'en em nec'hit gant petra ; hoguen e pe stad bennag e veac'h, pedit hag aspedit Done, trugarec'ait-hen, ha ra zavo ato ho pedennou etrezeg enha. Ha ra deuf peoc'h Doue, a zo dreist kement a eller da zonzal, da rei ul ho calonou hag ho sperejou, e Jesus-Christ hon Aotrou.

Lizer Sant Paul d'ar Filippis. IV. 4. G. M.

Eun dro varzudus digouezet gant eur c'hloarek.

An Aotrou Cochin, en amzer ma edo e Clouerdj pe e seminer Sant-Sulpis, e Pariz, a zigouezas gantha eun dro euz ar re vraoa. Ar c'hloareg iaouank-ze en devoa eur galon euz ar re vella. Douguet braz oa evit ar beorien, ha rei a reazieho kement a elle. He dud a voa o chom e Paris; pinvidig oant, hag he dad a roe dezhan daou loiz aour er mis da ober gantho ar pez a garje. N'eus ket izom da c'houlou pelec'h ez ea he arc'hant. He loizet aour a veze moniziet, ha pa deue ermez euz ar seminer, e vijent rannet etre ar beorien. Goassa a veze eo ar sizunioù kenta goude m'en deveze bet he arc'hant, e roe anezhan oll, hag aliez abent'anter ar miz n'en deveze mui eur guenneg.

Cridi a ellit ne ket peorien eo a vanke en dro d'ar c'hloareg iaouank pa deue euz ar c'hloerdj, d'ar iaou, da dremen he zervez e t'he dud. Oll beorien ar c'harter hen anaie, ha gouzout a reant, guelloc'h evithan he unan marteze, peur e veze pouner ha peur e veze scaon he c'hodel. Evelse d'ar sizunvezioù diveza euz ar mis ne dosteant ket gant kement a brez. Dont a reant gouscoude evit he drugarecat euz ar vadelez en doa da rei dezho pa en deveze ; hoguen neuze pa velent n'oa liard gantha, hen lezent, ha ne reant nemet he zaludi.

Eun dervez gouscoude, an dra-ma a voa ar pemp var-

gougent euz ar miz, pa denaz euz ar c'hloerdj e voa oc'h he c'hortoz e kichen an or eur baourez, unan euz ar re a voa boas da gaout he lod euz he zaou loiz aour hep miz. Houma a lavaras dezhan, en eur voela :

Aotrou kez, roit din eun dra bennag !

— Paourez kez, eme ar c'hloareg, n'em eus ket eul liard. Gouzout a rit d'ar mare-ma euz ar mis n'em bez ket peurliessa.

— Oh ! Aotrou mad ! c'hui so eur zant evel abro, zo en Env. Doue a rei deoc'h-hu kement a c'houlennot. Na goas so chomet clap, ha n'em eus ket eur vruzenen vara na dezhan, na d'am bugale ; va unan n'em eus ket bet eunesken daou zervez zo. Sellit, ma lacafac'h ho torn en ho codel, me zo sur e cac'ac'h eun dra bennag da rei din.

Ar c'hloareg a vouie n'en doa ket eun guenneg. Gouscoude, evel evit senti oc'h ar baourez e cassaz he zorn d'he c'hodel, ha petra gavas ? Tri bez daou scoet. Ar c'hloareg a jomas sebezet. Hoguen an arc'hant a roas d'ar baourez pchini, evel a velit, e devoa great eun dervez mad. Hoguen an den iaouank a voa ken nec'het ne vouie petra da ober. Eleac'h mont da di dre dud ez eas d'ar chapel da dremen he bennad dervez diag mach ar Verc'hez. Hag a c'houlenn, credabl, ha guenneg en doa great Doue eur burzud evit digas arc'hant en he c'hodel.

Da bardaez pa deuas da gaout ar glouer all, he vouezas petra voa digouezet. Cochin en doa guisket bragou ar c'hloareg a ioa er memes camprig gantha, hag ar bragou-ze a ioa tri bez daou scoet en he c'hodel evel ma on eus lavaret. Kementse a voue brudet, ha tad ar c'hloareg iaouank, pa glevaz, a gassas dioc'htu tri bez daou scoet all dezhan da rei d'he gamarad, hag evit rei courach d'he vap da guenderc'het da veza mad d'ar beorien, eleac'h daou loiz aour, e roe dezhan pevar bevec'h, evit ma chomje gantha eur guenneg bennag da rei er sizunvezioù diveza euz ar mis.

N'eus ket pell eur verc'hig vian a nao pe zeg vloaz, pa deuas d'ar guer euz ar scol, a gavaz he mam maro. Ar vam-ze ne devoa nemet ar verc'h-ze, ha ne voa nemet-ho ho diou o chom en eur gampric. Paour oant hag ar vam a c'houneze he bava o verza eun tamie marc hadourez bennag. An dervez-ze, pa zeaz he mere h d'ar scol, evel ne voa ket iac'h en em lakeaz en he guele, ha ne voa mui a vuez enhi pa denaz ar plac'big en dro. Me ho iez da zonzal pe guer strauillet, pe guer glac'haret e voue ar verc'hig paour. En em lacat a reas da grial, da vrata he mam hag an amezeien o veza deut o clevet an trouz, o devoe mui hoan oc'h he distaga dioc'h ar c'hloerdj-seclaset gant ar maro.

An amezeien neuze a reaz ar pez a voa diet evit ar c'horf maro, hag o veza laket gantho var var scaon, eun amezoguez a jomas da veilla epad an noz. Ar verc'hig a jomaz ive, rag caer a voue, ne voue ket gallet he c'has da gousket.

Ar vaouez chomet da veilla a grogaz ar c'housket en-

hi, ha pa zivorfiliz, e elevaz eur glemaden. Caout a reaz ar verc'hie savet var ar varf-scaon o vriata he mam, hag houma ar vuez o tont enhi, rag evit doare n'oa bet nemet semplet, scoet gant an derzien-gousec. Ar verc'hig avad a ioa dare da vervel gant he anken hag he rann galon, pe kentoc'h, gant he joa o velet he mam o tistrei d'ar vuez, evel pa na falvesje d'ar maro discregui euz a eur preiz nemet evit cregui en eun all.

Pa scrifet an dra-ma, ar verc'hik kez a ioa c'hoas toc'hor.

KELEIER.

Hor pidi a rer da lacat er gazeten ar pez zo ama varlerc'h :

Evit arme hon Tad Santel ar Pap ;	
Hiniennou euz a barrez Guitalmeze.....	43 lur.
An Aotrou-Lehvec, mear Landunvez.....	5
Mari-Anna Bonavantur, Landunvez.....	6
Mari-Renea Bonavantur, Landunvez.....	6
Franseza Quere, Landunvez.....	5
Assambles.....	67 lur.
Aotrou Person Sant-Cadou.....	20 lur.

Euz a barrez Elliant eus digasset ama pemp cant lur evit eur zouav en arme ar Pap.

Euz a barrez Plouziry eus digasset cant c'huec'h lur varnugent evit ar memes tra.

Al listen digor e ti an Aotrou Kerangal evit hon Tad Santel ar Pap en he izom brema, a zao hirio da seitec mil pevarc'hant pevarnugent lur. (174801.)

An *Impartial* a lavar, goude beza merket ar zom-ze : Ma lacafemp ama ar zommou all casset d'ar Pap ha ne dint ket tremenet dre hon daouarn, ec'h eller lavaret ez eus savet a vrema dre an escopti ouspen tregont mil lur evit hon Tad Santel. Honor eta d'an escopti, ha courach da guenderc'hel, rag izomou ar Pap ne deont ket var vianaat.

Ne vercomp ket ama an oll hanoiu so var listen an Aotrou Kerangal, rag re a blas a c'houlente kementse en hor c'hazeten. Ne allomp ket gouscoude miret da lavaret ez euz eur beleg euz an escopti hag en deus roet daou vil lur evit hon Tad Santel ar Pap, ha neuze ez eus pemp cant lur roet gant an itron Sant Luc hag he bugale euz a Landudec. Guellet a reomp ouspen, euz ar memes Landudec eur vatez o rei ugent lur, eul labourer douar o rei pemp scoet, eun all o rei pemp lur varnugent. En eur guer, ne ollomp nemet meuli calon vad ha feiz christenien fidel escopti Kemper.

Lavaret a rer eo ar c'hoezeg e vis kerzu eo e vezo digoret d'ar veac'hourien an hent houarn etre Castellin ha Landerne.

An trede varnugent a vis du ez eus canet, e Rom, eur servich solanel evit ar re zo maro o tifen an ilis. Ar zervich-ze so bet canet en ilis Sant Ian Latran.

Dillun eus bet eis dez, ez ea, euz ar Beljic hag euz an Holland, daou c'hant pevar varnugent zouav nevez en eur vanden da Rom d'en em lacat e servich an Tad Santel. Ar brassa banden eo marteze so bet gulet o vont var eun dro.

Dalc'h mad e casser traou, lienach, butun... euz a Frans da zouavet ar Pap. Casset ez euz a vrema ouspen evit talvoudeguez daou vil scoet.

Ervez *Cazeten ar Meziou*, an ed so guelleat he varc'had eun dra bennag er sizunvezioù diveza, da viana e calz a guerieu. Cals ed so deut er vro euz ar broiou all. An ed goan, gounezet dre amzer vad, a deu brao er meaz euz an douar.

Cazeten ar Meziou a ro c'hoaz an ali-ma d'al labourerien douar :

Brema ema ar mare da zeillaoui, da zestum an delion coezet euz ar guez.

Mar deus var dro ho foenneier guez elo, pe guern, destumit piz an deliou coezet euz ar guez-ze, rag mar ho lezit a stlabez, var ho foenneier, e raint droug bras d'ar gueot. An deliou guern hag an deliou elo, pa deont da vrcina, pa vezont distrempet gant ar glao, a deu anezho eun douar treng ha c'huero hag a laz ar gueot.

Er sizun dremenet eur marc'hadour a lakea gonfen dre ar c'hazetenon eun den a zoare evit guerza marc'hadourez en he stal, eun den honest, na petra-ta, hag a vije goest da zerc'hel ar stal daouzeg pe bevarzeg heur bemdez.

An dervezioù varlerc'h e teu eun den d'en em guinniguen dezhan :

— Ha bez oc'h eus-hu, eme ar marc'hadour, descadurez avoalc'h evit anaout priz ar varc'hadourez, ha merca ar pez a verzot ?

— Oh ia, Aotrou, me voar lenn ha scrifa mad.

— Ha caout a ra deoc'h ec'h ellot chom keit-ze bemdez er stal ?

— Oh ! evit an dra-ze, bezit dizoursi ; me zo bet seis vloaz er prison...

Pelec'h caout eun all guelloc'h da ziousal eur stal ?

G. M.

PRIZ AN ED.

KEMPER. — 50 Du.	PONT-NABAT. — 28 Du.
<i>Priz ar c'hant lur.</i>	<i>Priz ar c'hant lur.</i>
Guinis.... 17 lur, 05 c.	Guinis.... 17 lur, 92 c.
Segal.... 13 lur, 70 c.	Segal.... 13 lur, 33 c.
Eiz..... 10 lur, 76 c.	Eiz..... 11 lur, 63 c.
Ed-du.... 8 lur, 42 c.	Ed-du.... 9 lur, 79 c.
Kerc'h.... 9 lur, 83 c.	Kerc'h.... 11 lur, 43 c.
Avalou-douar 6 lur, « c.	Avalou-douar 5 lur, « c.

Ar Gerant: AR. DE KERANGAL.

Kemper, moullat gant AR. DE KERANGAL, Moullet an Escopti.

FEIZ HA BREIZ,

KELOU A BEP BRO, HA KENTELIOU VAR BEP TRA.

DIGASSET BEP SUL

Da guement Christen a goms ar brezounee.

Eun Abonnament d'ar Gazeten a goust :

Evit eur bloas.....	DAOU SGOUET.
Evit c'huec'h miz.....	EUR SGOUET.
Evit tri miz.....	C'HUEC'H REAL.
Eur gazeten ebken.....	DAOU VENNEG.

Ar baecamant a dle beza great aruoq caout ar gazeten.

ALIOU.

Ar scrijou a ve c'hoant da lacat er gazeten a dleer da adressi oll d'an Aotrou MORVAN, Beleg Kemper.
Ar paecamanchou a dleer da adressi d'an Aotrou SIAUVE, ebken. An abonamant a guemerer e ti an Aotrou SIAUVE, librer, ru Kereon, e Kemper.

KEMPER, 14 Kerzu 1867.

Hon Tad Santel ar Pap a c'houlenne tri dervez pedennou evithan hag evit an ilis santel a behini ez eo ar penn. Ar vouez-ze zo bet clevet dre ar bed oll christen. En escopti Kemper eo eun dudi gulet gant pebez prez e teu an oll dud fidel da zenti oc'h mouez ho escop a c'hourc'hemenne dezho an tri dervez pedennou-ze. E pep parrez, an iliz a ioa re vihan, epad an tri dervez, evit digumeret ar re a deue da bidi evit ho zad, evit vikel Jesus-Christ. An tri dervez a ioa re ver; ar veleien, evitho da glasc re all d'ho sicour, a ioa re nebeut anezho evit silaou an oll gristenien a felle dezho tostet oc'h ar sacramanchou. Evitho da labourat nos deis couls lavaret, ar confessor et a ioa ato ber evit contanti devotioñ ar gristenien, pere, en despet d'ar goal amzer, d'ar glao, d'an erc'h ha d'ar scorn, ne c'hinent ket evit chom en iliz azaleg pemp heur dioc'h ar mintin beteg unneg heur pe greisdeiz evit gortoz ho zro da vont er gador gofez.

Setu ar c'helou a deu deomp euz a veur a gorn euz an escopti, hag ar pez on eus gulet hon unan. Feiz ar vretonec a velomp eno beo ha stard. Clevet o deuz en devoa an Tad Santel izom, hag e cassont dezhan ho aluzen; clevet a reont en doa izom ive euz ho fedennou, hag en em lakeont oll a unan, a vanden, da bidi, ha da redia, a eller lavaret, an Env da zont da zifen an ilis santel, da zifen an hini a zalc'h plas Jesus-Christ var an douar. Rag ar pedennou-ze, ep mar, ne vezint ket collet, hag esperout a eller e teuio Doue, gounezet dre guement a bedenou, a gommunionou hag a oberou mad all, da rei d'ar gristenien vad ho goulenn ha da zével he vreac'h evit pel-lat ha cas en ho zro enebourien he ilis.

Ar zoudardet bet gouliet e servich an Tad Santel ar Pap a zalc'h ato da lacat souezet an oll dre ar feiz a ziskuezont. Ne allan ket miret da lacat ama c'hoaz eur guer bennag evit skuer vad an oll.

Ar zouav Sevilla, euz ar Perou, an hini ma on eus

comzet anezhan c'hoaz eur vech pe ziou a glevet aliez o lavaret : « Ne c'houlennan nemet eun dra oc'h Mari eleac'h ar goad am eus scuillet evit vikel Jesus-Christ, hag eo ma tistroi va zad oc'h Doue.

Sevilla a ioa anavezet etouez ar zouavet dindan al leshano *Viva Maria ! Bevet Mari !* Abalamour ma lavaret dalc'had ar c'homzou-ze.

Ar zouav iaouanc Quatre-Barbes, a behini on eus comzet ive, a zo maro evel eur guir gristen ma zoa. Lavaret on eus oa bet troc'het he vreac'h diouthan. Epad ma tistagne ar medecin he vreac'h, he dad a ioa eno e kichen he vele var he zaoulin o pidi.

Eun heur goude unan bennag o veza eat da c'houlenn kelou euz ar soudard iaouanc, e voue respontet dezhan :

— Ema o lavaret he chapeled gant he dad !

Setu eno hag a ziskuez eun tad hag eur map christen.

Er gazeten *Revue de la Presse* e cavomp eur pennad caoz etre eur breur hag eur c'hoar, ho daou iaouanc flam, divar benn eur breur dezho, cossoc'h evitho, a voa eaf d'en em lacat e renk zouavet ar Pap. Ar gaozeaden-ma a reant en dervezioù ma edo soudardet an Tad Santel o stourm oc'h an dispac'herien.

— Mari, ha n'ec'h eus-te ket a dristidiguez hag a nec'hamant o sonjal ema hor breur Paul du-ze var var euz he vuez ?

— Oh tra ! laouen braz onn zoken ha fongue so en hon o sonjal e ra eun dra bennag evit hon Tad Santel ar Pap.

— Ha ma ve lazec, petra rafez ?

— Gouela a rafen dezhan ; mes goulenn a rafen beza lezet da vont dirag ar sacramant da lavaret an *Te Deum*.

— Ha me, petra levezec din da ober ?

— Te, ped Doue da greaat da tec'het, ha goulenn digant hon tad hag hor mam da lezel da vont da Rom eleac'h hor breur.

— Da drugarecat a ran euz an ali-ze a roez din ; pell a ioa em oa sonjet, hag em oa c'hoant da ober ar pez a levezec.

veudiu hoc'h east guiniz, ha frouezou kenta ho touar a ghegnigot e ti ann Aotrou ho Toue. Mirit dreist pep tra deiz ar Sabbat, ha na zeuit ket dira-z-oun ho taouarn goulo.

Hag ann Aotrou a lavaraz da Voizes : skrivit da gas gan-ehoc'h ar c'homzou-ma dre bere em euz great kevredighez gan-ehoc'h, ha gant Israël.

Moizes a choumaz var venez Sinai gant Doue, ar veach-se c'hoaz, daou-ughent devez ha daou-ughent nosvez, hep dibri nag eva, hag ann Aotrou a skrivaz var ann taolennou dek komz ar ghevredighez, da lavarret eo, ann dek gourc'henn.

Ha pa ziskenne Moizes divar menez Sinai, e toughe etre he zaoarn diou daolen ann desteni, ha ne ouie ket e oa savet daou vann-sklerijen var he dal, abaoe ann diviz en doa bet gant ann Aotrou. Aaron ha bugale Israël, o velout ar bannou-sklerijen var dal Moizes, ho doe aoun o tostaat out-han. Ha Moizes ho galvaz, hag e teujont d'he gavout, da ghenta Aaron ha pennou ar Sinagog; ha pa en doe komzet out-ho, holl vugale Israël a zeuaz ivez beteg en-han, hag e c'hourc'hennaz d'e zho ann holl draou en devoa klevet gant ann Aotrou var venez Sinai. Ha pa en devoa lavarret ar pez en doa da lavarout neuze, e lekeaz eur vouel var he fas. Pa'z ea da gavout ann Aotrou ebarz enn tabernakl, ha pa gomze gant-han, e tenne ar vouel ken na zeue er meaz, neuze hel lekea adarre var he fas, hag e tisklerie da vugale Israël ar pez a vije bet gourc'hennet d'e zhan.

(Benit, eme Zoue da Voizes, diou daolen vean henvel ouz ar re hoc'h euz torret, ha me skrivu adarre va gourc'hennou var-n-ezho. Doue a ra bemdez ann drugarez-se e kenver ar bec herien a zistro out-han a greiz ho c'haloun. Skriva a ra a-nevez enn ho encou he lezen hag he garantez pere a oa bet displeheret eno dre ar pec'hed. Mes evel ma Jezuz Doue gant Moizes ar boan da ghempen ar veach-ma ann diou daolen, ar pez n'en doa ket great ar veach ghenta, er memes tra e fell d'e zhan e tenfe ar pec'her da boania dre ar binijen hag ann oberiou mad evit meritout ann drugarez-se.

Abaoe ann diviz santel en doa bet Moizes gant Doue var ar menez, e oa savet daou vann sklerijen var he dal ha ne ouie doare. Nep a oar ober ar beden a galoun, a gav aliez var ann traou a fell d'e zhan da gayout, eur sklerijen hag her gra souezel. Meur a zant a zo bet gulet eur rodik-heol endro d'ho fenn epad ma komzent oc'h Doue enn ho feden.

Ar vouel a lekea Moizes var he benn pa zisklerie urzou Doue d'ar bobl, a verke eme Zant Paol, dallentez ar luzeyen enn amzer da zont. Rak-se, hirio, emezhan, pa Jenner d'e zho levriou Moizes, ho deuz eur vouel var ho c'haloun; ne fell ket d'e zho e ve euz a Jezuz-Krist e komze Moizes. Hoghen pa zistroint ouz Doue a vir galon, ar vouel-ze a gouezo, ha neuze e kredint ez eo hen ar Messiaz.) H.

AN TAN KENTA

Hag hen zo caer ha brao am tan kenta-ze euz ar goan ! Nag hen zo d'ndiuzo sellet out-han, pa veler euz ar skilfen-dero ar flammennout taolivet e ruz o sevel a bep-tu d'an oaled ! Nag a draou a dremen neuze, e pen an den pleguet ha stouet var he dan ! Klevet a-ra an avelio tont en eur satal da skei var he, huenestou, mouez ar vrân mesket gant eur bar-amzer euz ar skub-dellion. Ha ne gav ket d'e hoc'h gouelet encou an dud, varo hoc'h euz caret var an douar, o sevel euz gouled an oaled, hag o vont dre ar siminal da vesga ho mouez clemuz, gand hini ar goual-amzer ? Spered an den a ruill var meur a dra, pa n'em gay euz an abardaez da azeza var eur scabellie vean e corn an oaled.

Epad tomder an anvou, coneriad, savet, mintin-mad, da ganaden kenta an alchoueder, a jommo en he barkeier beteg ar fulen diveza euz a selepien an deiz, ha ne dosteo euz he di, nemed pa zeuio an hent evit-han da vont da gousket : mez eur vech peur-c'hreat an east, berniet en dro d'an ti ar foen hag ar c'holo, an deiz deut da verraat, al labourer dianken ha dibreder a n'em laca da nosvezi. Ellumi a rear eun tantad mad a dan, hag holl dud an ti bodennet en dro d'an oaled, a drit a levenez. En nerz euz an tan-ze, an dud coz a gav eun eil iaouankiz : an domder en eur laca ho goad ha redet dre ho gouazied, a ro d'e zho eur spered nevez, hag a zistaguel ho zeod scornet gand an oad. En eur ober stam, pe en eur neza ho c'heignel, ar grouaguez a zillaou, hag ar merc'hed iaouanc ken sioulic ha tra, a sonj en nevez amzer, e miz ar bokedou, e miz Mari.

Eur mare a zeu cousgoude, ma kemer an tad eun diaveaz santel : ar mare-ze eo pa veler ar skilfen diveza devet, ha pa ne veler mui etouez al ludu nemed eur c'hlaouennic benag. Neuze an tad a zao divar he scabel : dizeler a ra he ben-guen, ha goude beza leusket da goueza he vlec'hir, en em laca d'an daoulin-gand he holl dieghez. Ar beden a vo hir, mez beza e vezo ive caloneg. Goude beza adoret Doue e varfersho an Drinded, e teuffer da n'em voestia d'ar Vere-loz, d'ar Zent ha d'an Elez, ha pa n'em gavontio an amou, ne vezo ancounac heat n'kun beteg an malet diguez. Evidome, ganet ha savet var ar mæz, ne velan morse o tostaat eb ar vrasa levenez, an deisiou kenta euz ar goan, nag eb digas d'ho da sonj, en eun dra euz va bugaleach.

P'edon c'hoaz iaouankic, eun midisin coz divar ar mæz, a gasse aliez ahanon-gant-han, en he gar pa zea da velet re glanv. Beza douguet en eur gariole, vona va brassa levenez : d'ezze eta, ne dremenon devez ebet, eb goulen digand ar midisin hag hen en doa da vont en hent, evit goulet eur c'hlanvour benag. Eun deiz e lavaraz d'in :

Hirio ez an pell, marteze ne erruinet ket abred er gear; cousgoude m'ac'h euz c'hoant, pign em c'har. Beza am euz da vont eun tammic en tu-all da Neiz-Vrân. An heol a zo dija izel, ha var a velan e vezo noz-du pa zigues

fomp en dro : teir-leb vad a zo da vont, ha kement all da zistrei : mont ha dont, c'huec'h leo.

Lavaret a ruz-ia : edomp edija e gouel Sant Andre e miz du. Ab d'ellion, seac'h distiguet euz bar gouez, a nije gand an avel cornaouec, hag ann douarou daket e noaz gand an diveza gouiddeghez, a roe d'am daoulagad eun daolen euz a varo an den, ha gousdoude biscoaz n'em boa cavet Doue caeroc'h en he oberou egued en abardaez-ze. Stereden al labourer a skeit dija liguernuz en en, hag an hoel euz ar mor o pigossat ar garrek-hir, hag o rillil var bili Pontusval, a zigasse va beteg eun drous henvel euz hini ar garun o skei a bell e creiz an avel, e bousq d'ezze eta, ne dremenon devez ebet.

Cousgoude carolen ar midisin a jom a za dirag dor eun ti savet en he bart he-unan, ha d'bareet da veza lojez euz paour-keaz pesketier. Eun den iaouanc, mellet mad, a zeu euz an ti dister-ze, hag a grog e pen al loen, etre ma rancaz ar midisin chom e kichen ar c'hlanvour.

— Ahanta, eme ar midisin, petra a zo a nevez aman ?

— Allaz, aotrou, ke, eme eun den coz, hor merc'h a zo clanv braz !

Goulet a rejomp neuze, eur vere h iaouanc, oajet a zao vlog varn ugent pe var dro. Gouvezet edo var un tammic gouele colo. He daouarnigon a ioa ken seac'h hag eun tam coat : he alan a ioa bel, hag he daoulagad seouffed, a droe hag a zistroe en he ten, ha cousgoude daoust d'he zempladurez, he zeod ken doussic ha tra, a lavare an Ave Maria, etre ma tremene greunennou he chapeled dreist he bizied diasclez.

Ar midisin, goude beza eveseat mad euz ar glanvourez, a lavaraz da dud an ti : « Red eo tomma mad ar vere h-man, gouelat a rit ez eo sclasset, hag an ezen a zo pud. »

Gur a lizirit, aotrou, eme an tad : mez evit caout kenneud d'ober, an, eo red mont beteg Penmarc'h, diou-leo hennag-ahan. Va mab, ha me a zo bet em em guemeret fall gand an avel gornaouec a c'houez hirio, mez yarilhoaz m' a ielo da glask kenneud d'ar c'hoad.

Red e velle mont ragtal da geynenta, eme ar midisin, rag hennagouelata rit, an paour-keaz, Annaic a zo scornet tra.

Var guement-ze, an tad a d'ostaez he vere h, hag a lavar d'ez-hi : Annaic, m' a skei d'ez me ziscaro ar vezen avalou a zo aze e pen an ti, ha gand he scourou a rai d'it tan da domma ? Petra, levenez-ze. Nan, nan, va zad, arabat eo pilat ar vezen-ze, eme ar glanvourez ; tra, tra, arabat eo he discar, siguel eo gan-en guedal varc'hoaz. Mez ar medisiqua lavaraz a nevez d'an tad ez oa red mad caout eun tu eun tam kenneud da ober tan. Faneh neuze a grog euz he voc'hal, hag a za margalongeg d'ar vezen avalou. En eur vont e lavar d'eomp : « Setu aman-perag ne fell ket da Annaic e velle taguet ar vezen-man : Va mab cossa, Doue d'hen pardono, en euz embodet ar vezen-man var eur scour spern-guen : Mez ar paour-keaz mab-ze, a zo bet heuzet ahon-

tu en avel da c'harrek-hir, en eur zont, euz a zevel he rouejon. Setu perag, dre garantez evid he ibrean man, Annaic a zalc'h kement d'ar vezen-man, hag en oall lavret kement-ze, etre ma rede an daolen euz he zao-lagad, ar voc'hal savet en ear, a goueze a daoulin-gand var ar grichou, hag he discaraz eb d'ale pell. Laket e vone eun nebeud scourou en oaled, ellumet e vone eun tantad tan, ha lekeat Annaic en he guever. — Neuze ar midisin ha me a n'em lekeaz en hent evit distrei.

Tri devez goude, e c'hoantez mont adare da velet Annaic. He c'haout a ruz e corn an oaled. He bizied castiz, a gasse aliez he c'hrusif d'he muzellou, ha cousgoude he daoulagad ne heanent da bara var an scour diveza a zeve en oaled. Mez sionaz, an scour-ze n'iaouanc nebeud ha nebeud : he gouelat a roaz o teuzellou hag elfen, hag en divezo vont da netra. Annaic gouez a zao he daoulagad var zu an En, hag a leusk he huanaden diveza ! Gand ar flam-diveza euz ar vezen embodet gand he breur, he ene a zao en ear, evit mont d'he goad da rouantelez an En. Eur Mennad-Divred.

AR MESSAER BERTELE

(UNNEVET PENNAD.)

Ar pez en doa great da Vertele promed d'al lapinis muioc'h douetuz evit ne alje da seven, eo ma crede ervad n'en doa izom da gaout aoun ebet rag al labourer displun-ze, evel ma ho galve pa vije he bevarzeg camarad en dro dezhan. Hoguen o veza deut, ar rag diskuez dezho he vouezieguez, da velet pe leac he c'home ar re o doa lezet cousket, he galfont na den na bag. Ar gouskerien c'edab, pa vont d'houel, ne bife ket ar vro dezho, hag a ioa eal kuit gant ar rag eb en em laca e poan gant ar re a ioa eal lag en ezenen. Bertele neuze hag he dri vartolod a serabaz ho scourou, mes re zivezad edont. Red oa mont en dro da gaout al lapiniz hag en em denna guella ma c'hejent.

Bah ! eme Vertele d'he dri vartolod, deomp atao ; er c'his bennag a ramp !

Neuze e lavaraz d'al lapinis : Mar oc'h eus unan clan bennag, digassit din daou da guenta, ha pa vezint pareel, ni velo penaus da ober, ma bez c'hoas re all. Neuze evit ar re iac'h, e rin eur frigoueh hag ho laca, me gred, da lipad ho mourrou. Lavaret a rah evit ar re iac'h, rag ar re glanv o devez ket ho lod, ne barean morse den nemet chom a rale erren ep dibri lam, hag evelse evessait mad.

Evel ma voa bet d'ho messaer mevel medesin, e voa boas da gas gantha, stag d'ho he gostez, eur voestik yihan eleac'h ma veze ato eul louzou bennag, hag ive pebr, holen, ha zoken eur bedvec bennag euz ar re a gas ar vedesinet gantho d'ho heul peurlissa. Dre jans n'en doa ket collet he voestik.

Digasset e voue dezhan da guenta unan, hag a voa oc'h hirvoudi hag o c'hlaouri gant ar boan dent. An den gouez n'en doa nemet eun dang merglet. He ziou javed

a ioa iac'h, hag he zent all ha ioa guenn ha lem evel dent eur c'hi, goest a dra sur da zrailla ha da choeat al louzaer eskern hag all. Bertele a glasc he durkezig pe he dennerez dent, hag en eun taol e tenn andant clan, araog m'en doa bet amzer ar c'heas lapin da velet petra voa sonch da ober dezhan. Hoguen eur c'hinaden a reas gouscoude hag eur iouaden a loscas, rag eun tamig poan en devone, hag e credas, me oar vad, ez eat da freza dezhan he javedou. Bertele a dleas caout eun tamig aoun, rag daoulagad al lapiniz en em lakeas da luguerni evel pa vijent oll o vont da lonca al louzaouer. Mes ar boan o veza dent prim da vouga, al lapin dizantet en em lakeas da lamet ha da fringal gant he levenez, hag evit diskuez he anaoudeguez vad d'an tenner dent, en em lakeas da boket dezhan, pe kentoc'h da vastara dezhan he vizach gant ar c'hlaouren hag ar goad a zistrinke euz he c'hinou. Hounnez eo eno ar c'hiz evit trugarecat.

An eil den clan a voue digasset d'al louzaouer a voa an derzien gantha. Bertele a gavaz en he voest eun nebeut padadou louzou terzien, hag a roas dezhan eul louzaouad ha ne voa ket bihan. Hoguen ama, anez eur burzud, ne alle ket para ker buhan he glanvour; evelse e tisclerias crenn ne vije ket pare mad an den-ze kentoc'h evit tri devez, hag e voa red dezhan chom ep tam epad an tri devez-ze pe mont da glasc eul louzaouer all eleac'h ma carje.

Epad ma edo al louzaouer o rei he louzou terzien, al lapin a ioa pareet he boan dent a iea, a vezen da vezen, pe mar kerit, a c'hud da c'hud, da gas ar c'helou euz ar burzud great en he guenver d'ar re ne voant ket dent da zellet. An oll a stracle ho daouarn o velet ar boan dent-ze eat kuit ker buhan. Evel louzaouer eta oa savetet he grog gant Bertele. Hoguen brema e voa red ober ar c'heguiner.

Bertele a lavaraz neuze d'he dri vartolod laza dezhan eun nao pe zeg lapin evit ma c'heje ober eun tam libhe-bao d'al lapinis. Kementse ne voue ket diez, rag ep finval euz al leac'h ma edont, e voue guelelet ep dale daouzeg lapin astennet var al leton. An dud gouez ne voant ket nebeut souezet o velet pe guen eun e scoe ar vartolodet, ha pe guen eaz e chenchent penn evit penn d'eur c'heaz lapin a ioa en dra helle o peuri ep sonjal e droug ebet.

Neuze Bertele a lavaraz d'al lapinis, pe da viana ar spagnol coz a lavaraz dezho euz he bers : « Clevit, mont a ran da ober eur frigousen; mes ne vezo nemet ar pennou braz ac'hanoc'h hag he zanvaio; goudeze mar bez cavet mad, me a labouro ive evit ar re all, rag ne ket danvez frigousen eo a vanc ama. »

Ar messaer a choazas tri euz al lapinet a ioa lazet evit ho lacat da boazat. Ar spagnol coz a gavas eur c'hos castoloren verglet bet taolet eno euz eur pense bennag, hag evit tan ha keuneut ne vanke ket. An tri lapin a voue dispennet, ha Bertele a dennaz al lard euz a zaon pe dri all evit fritan an tri-ma. Evel ma en devoa eun nebeut pebr hag holen, ha ma cavaz dre eno louzon a

c'heuz mad da lacat gant he zanv, reas coantig avoalc'h he dan libhe-bao. Dre ma reas euz eur c'heuz ar guella euz ar frigousen, hag an oll o doa c'hoant da gaout ho lod anezhi; lodizoken ma na vije ket bet soet var ho biztet, nio divije ket gouezet ma vije tennet divan an tan evit staga dezhi. Hoguen Bertele a lavaraz adarre cre ha seac'h ne vije nemet ar vistri vraz oc'h he zanva.

Ar vistri vraz pe an ezac'h meur a voa pemzeg anezho hag an daou glanvour louzaouet a ioa euz ar pemzeg-ze. An hini a ioa clan gant an derzien a ioa condaonet da jom tri dervez ep dibri, ha dre-ze ne dlac ket gant he lod. Gouscoude va den a zelle a dreez oc'h an tri lapin poaz er gastoloren; ar c'hoez a blije d'he fri, hag e crede ervad e ilie ar vlas plijout ive d'he c'hinou. Setu hen o tiscleria oa eat he derzien kuit hag en pare tre. Neuze en em lakejot adarre da gual ha da veuli al louzaouer o velet an eil burzud-ze.

Ar frigousen a voue cavet ker mad, ma lakeaz ar pemzeg ozac'h meur da lipat ho mourrou, ha ma voue red d'ar c'heguiner ho lezel da bocat dezhan oll an eil varlerc'h eguile. Hoguen mar doa bet mastaret gant glaouren an hini en doa pareet euz he boan dent, ma ho les da zonjal e pe stad e voue laket gant ar pemzeg-ze! Rag al lapinis ne voant ket boas da gaout serviet da zec ha ho muzellou, ha n'o doa ken bevec nemet ho fourchedou a bemp bez.

Ar re a ioa bet lezet da zellet, en em lakeas neuze ive da c'houlou ma vije great frigousen evitho. Bertele a brometaz her graje ma cavent eur gastoloren braz avoalc'h evit an dra-ze.

Al lapiniz a voa kement a tougue enho da veza cavet eun den evel Bertele ma hen disclerjont roue dibc'htu. Casset e voue neuze var zoug da gaout ar guez palmez e beg pere edo lojeiz he zujidi. Evel ne alle ket cripa oc'h tronjen ar guez-ze, unan her c'hemeraz var he ziouscoas, eun all a zavaz hema, hag evelse ker an iova great ar skeul ha savet ar roue beteg ar paleziou eleac'h ma saludaz ar re goz, an itronezet hag ar vugate hag e voue diskennet adarre d'an douar dre ar memes skeul. Setu eta Bertele, en eun dervez, var var da veza debret dioc'h ar mintin, ha roue abenn an noz. Guelelet a raimp penauz en em dennaz er garg huel-ze.

(Eur pennad-all eur vech-all)

Hano ar Zent evit ar Sizun-ma.

- DILLUN, 16 Kerzu. — Sant Euzeb escop ha merzer.
- DIMEURS, 17. — Sant Edouard roue a Vrozaoz.
- DIMERC'HER, 18. — Cotuerou. Iun havijel. Ar verc'hez var ar mare da vouilloudi.
- DIZIOL, 18. — Sant Magloar, escop.
- DIRGUENER, 20. — Sant Guinal, abad. Cotuerou.
- DISSADORN, 21. — Sant Thomaz, abstol. Cotuerou.
- DISSUL, 22. — Pevare sul euz an asvent.

An Abostol hirio :

Ra deui an dud d'hor c'hemeret evit ministret Jesus-Christ, carguet da rei perz d'an dud e misteriou Doue.

Hoguen ar pez a c'houlenner digant ar re o deuz ar garg-ze eo ma vezint cavet fidel.

Evidonme ne ran fors ha pa vevit barnet ganeoc'h pe gant n'eus fors pion, ne gredan ket ket nebeut en em varn va unan. Rag petra bennag ne rebech va c'houstians netra din, ne d'oun ket diseng evit kementse. Hoguen an Aotrou eo va barnet.

Rag-ze na varnit ket araog ar mare, ken a deui hor Zalver pehini a ziskuez er sclerjen ar pez zo euzet en denvalijen, hag a roi da anaout ar sonjezonou euzeta euz ar c'halonou; ha neuze pehini en devezo digant Doue ar veuleudi zo dlet dezhan.

Kenta lizer Sant Paul d'ar Gorinthianed. IV. 1
G. M.

KELEIER.

An Aotrou Hingant, person Plogoff, so hanvet person Ploneour-Lanvern.

An Aotrou Cam, vikel e Plounevez-Lochrist, so hanvet person Plogoff.

An Aotrou Lojou, vikel e Plouenan, so hanvet person Bolazec.

An Aotrou Argoat so hanvet beleg evit an dud a vor.

An Aotrou Cadiou, vikel e Crozon, so hanvet beleg evit an dud a vor.

An Aotrou Goff, vikel e Conkerne, so hanvet vikel e Kerber (Sant-Per-Quilbignon).

An Aotrou Labigou, vikel e Beuzec-Conk, so hanvet vikel e Conkerne.

An Aotrou Diquelou, beleg ar prison, e Brest, so hanvet person Plouedern.

Beleien canton Plouare o deus savet pemp cant lur evit eur zouav e servich ar Pap.

Al lister digor e ti an Aotrou Kerangal evit hon Tad Santel ar Pap, a zao brema da drivas mil daou c'hant lur (18,200 k) ar gual isseurt ar roue ar vevit.

Al lister-ze o velomp o deus beleien canton Castelnevez roet pemp cant triguent lur evit hon Tad Santel ar Pap. Guelelet a reomp ive e deuz eur gristenez vad euz a Blouneour-Trez roet, etre diou vech, pemp cant lur da lacat eur zouav e servich an Tad Santel.

Er pemzeg dez diveza a vis du ez eus bet n'ouspet tan goall en escopti; e Treflez, e Plougonven, e Plomodiern, e Gleden-Cap-Sizun, e Laurivoare, e Plomodiern adarre, e Kempenle, e Plouvenec, e Guilligomarc'h, er Merzer, e Guisseny, e Gouezec, e Sibiril, (ama eur baourez kez coz so bet devet en hedochen), e Sizun, e Plouigneau, e Pleyber-Christ, e Plobannalec. Kementse a ziskuez ez euz izom da lacat evez oc'h an tan couls er goanv evel en hanv; marteze muioc'h er goanv, abalamour ma rer neuze muioc'h a dan, ha ma zer gant goulou d'ar c'hreier, d'ar grignolou hag e kement leac'h zo.

An Aotrou'n Escop Charbonnaux, vikel ha bostolig ar Maissoir, a ioa e Frans abaoue gouelio; Rom, a so eat en dro d'he vission. Gantha ez euz eat eun missioner iaouang euz a di ar missionou diaveas bro an Aotrou Boyer, euz a escopti Albi. An Aotrou Boyer a ioua da vission Saigon.

Ha c'hoant oc'h eus-hu da c'houzout petra gasete ma vouller dre an Frans oll? Setu ama daou vil pemzeg ha triguent. — Nao c'hant triguent euz an c'hazeten nou-ze a zo moulet e Pariz, hag unnek cant pemzeg dre an departamanchou. Tri c'hant peder ha pevarguent anezho a gomz euz ar c'houarnamant, ha c'huzek cant unnek ha pevarguent ne reont ket.

Abaoue eun nebeut derveziou, eme *Gazeten ar Meziou*, ez euz e pep leac'h discar var ar guiniz, eun tamig nebeutoc'h var ar c'herc'h. An edou all a iom e doue doare. Pegueit e pado an discar-ze? Den ne voan. Calzed a deu euz ar broiou all; hoguen cals broiou so ive hag o deuz izom, ha setu brema ar mare ma vezo dies digas ed dre vor. Cridi a reomp eta ne oule an discar-ze padout nemet eun nebeut.

Kentel roet da eur c'hanfard. Lennet em eus, n'eus ket pell eur guentelc'ho roet gant eun den iaouang da unan euz ar rederien hent pe euz ar c'halouperien bro-ze a ia euz an eil carter d'eguile, euz an eil ker d'eben da verza marc'hadourez evit ar varc'hadourien vras.

En eun hostaliri a zoare ez oa eur vanden euz ar rederien hent-ze o kemeret ho fred, hag e c'hellit cudi, e voa caos cre ha gae gantho. Kement-ma a ioa er c'horaz, eur guenorvez. Digouezout a ra eun den iaouang o tremen hent, hag en em laca ive oc'h taol evel ar ro all. Hoguen ne voa anavezet gant nicun anezho.

Digas a rer souben ar c'hig, hag an den iaouang ma a hej he benn, ne guemer ket. Digas a rer kig, daou, tri seurt, hag an den iaouang a chom ato da zellet. Ar rederien hent a zelle an eil oc'h eguile, hoguen ne lavarent guer, naoun a ioa, ha ne ket eaz lavaret calz a dra pa vezat o chogat.

Gouscoude an amezeg, tosta d'an den iaouang, eur c'hanfard hag a zehre kement ha pevar, hag a efe kement ha c'huec'h, pa en doa touret brao he naoun hag a dizec'het, a reaz eur zell a dreuz outhan, hag a lavaraz :

- Asa, camarad, n'oc'h eus ket a naoun ta? pe marteze clan oc'h?
- N'oun ket clan, eme an den iaouang, ha ne ket naoun a vanc din ken nebeut d'ousp'ez servit?
- Mad, neuze, o c'hortos petra em d'oc'h?
- O c'hortoz bouet vijel da zont var an d'ao?
- Bouet vijel, petra ne ellet ket dibri kig?
- Gallout avoalc'h, ma vije bet dervez kig em bije staguet dezhan couls ha c'hu?
- Dervez kig!... Neuze, e savaz eur c'hoaz etonez ar rederien bro... Ah! ah! ia da l'hirio ema ar guener, hag an Aotrou a ra vijel evit senti oc'h he berson!

FEIZ HA BREIZ,

KELOU A BEP BRO, HA KENTELIOU VAR BEP TRA,

DIGASSET BEP SUL

Da guement Christen a goms ar brezouec.

Eun Abonnamant d'ar Gazeten à goust :

- Evit eur bloas..... DAOU SCOUET.
 - Evit c'huec'h miz..... EUR SCOUET.
 - Evit tri miz..... C'HUEC'H REAL.
 - Eur gazeten ebken..... DAOU VENNEC.
- Ar baecumant a dle beza great araog caout ar gazeten.

ALIOU.

Ar scrijou a ve c'hoant da lacat er gazeten a dleer da adressi oll d'an Aotrou MORVAN, Beleg e Kemper.

Ar paemanchou a dleer da adressi d'an Aotrou SALAUN ebken. An abonnamant a guemerer e ti an Aotrou SALAUN, librer, ru Kereon, e Kemper.

KEMPER, 21 Kerzu 1867.

A bep amzer ez eus bet brezel etre ar gaou hag ar virionez. Abaoue ma zeo deut Lucifer d'en em zével a enep Doue, abaoue ma zeo deut a benn da lacat an den kentä da derri gourc'hemen he grouer, en deus cavet ato var an douar servicherien pe likizien pere argumer skuer dionthan, ha ne eanont da vrezelecat a enep ar re a fell dezho chom fidel ha sentuz. Dreist oll abaoue ma zeo deut Jesus-Christ var an douar da zigas al leunder euz ar virionez, ha da lezel ar virionez-ze gant he ilis, mignonet ar gaou hag an devalijen o deuz ato bet outhi eur gassoni ar vrasa, hag ar pez ho laca da gonnari eo defot na ellont he distruja. Argounnar-ze a enep ilis Doue, a enep kement guir gristen a zo, morse n'o deuz hen diskuezet sclerroc'h ha splamoc'h evit na reont hirio. Morse an isern n'en doa lakete pennou he sclavet sonjou crissoc'h, nag etre ho daouarn armou scrijusoc'h evit a ra brema. N'eus crisdéri, n'eus gouzeuri ebet ha ne vo mad dezho pe vo meneg da vrezelecat a enep vikel Jesus-Christ, a enep an oll gristenien catholic.

Ha c'hoant o deus-hi da zistruja cals tud var eun dro? Ne ket var dachen ar vrezel eo ez aint da stourm oc'h ho enebourien; mes lavaret a raint : Kemeromp eur varillad poultr; lakeomp hi dindan ar c'hazern ha lakeomp ar c'hazern da zével en ear gant kement hini a so enha. Evelse ne lakeimp ket hor buez hon unan e danjer oc'h en em zizober euz hon enebourien.

poulz an dud dileiz ha dizoue, dre ho c'kentelio, ar re ho zilaou. Oc'h ho lacat da drei ho c'hein da Zoue ha da oll guirionezou ar feiz, ho deskont d'en em voaza dioc'h a bep seurt torfejou.

Er sizun ma em euz eun dra bonnag, choas da lavaret divar benn sondardet ar Pap, ar c'hont iaouank Douel a ioa bet nouet. He dad a ioa en he guichen. An Aotrou Arc'hescop Testard a ioa var al leac'h hag a lavare dezhan :

Sellit, va map, pokit d'am c'hroaza a escop; gouzout a ritez euz enhi eun tamigeuz a groaz hor zalver en deus gouzanvet ar maro evidomp.

— Oh! Aotrou Arc'hescop, eme an hini elan, eun eurusdet eo evidhon pokit dezhi, ha goude beza standet he vuzellou outhi, etro oc'h he dad, diage lavar dezhan :

Va zad, pokit ive d'ar groas-ma.

An tad, an daeldu en he zaoulagad, a zo en em daolet etre divroc'h an Arc'hescop penhi a roe dezhan ar groas da boket.

An due a Alcantara a ioa deut da Rom da velet he vap a ioa bet goal c'houllet. En em gaout a ra er mare ma zea ar medecin da louzaou he vap, hag en doa eun troc'h poanius bennag da ober.

— Cassit an tad-ze kuit a leveriot, ne ket mancout a rafe he galon dezhan o velet poaniou he vap.

— Nan, eme an tad, pa em eus roet va map d'ar Pap, em euz he roet abez. Gouzout a reomp c'helle beza ma c'haniet pe coll he vnez o titep an Tad Santel. N'am eus ket a aoun evit guelet goad va map o radek.

Ar c'hazetennoù a gomz euz a varo mevel a gambr ar Pap, hanvet Anjelo Nesti. He glenvel hag he varo o deus diskuezet eur vech c'hoas pe guer carantezuz eo calon Pii Nao. Ar roue euz ar bed hag en deuz muia labour, ar muia tregas, a gave amzer da vont da velet he zervicher elan, hag etal guele ar servicher-ze Pii Nao a vouele....

E bered Kær X... e voa eun dervez eur vere'hig deg pe zaouzeg vloas guisket e canv. Eno ez eus vardro calz a veziou bleuniou pe fleur a bep seurt. Ar vere'hig a iea dre an aleziou, hag a gutuh dre ma zea, ama eur rozen, ahont eur fleuren all, hag e selle bep en amzer en dro dezhi evit guelet ha ne voa lagad ebet o para varnezhi. Cridi a rea ne voa den er vered.

Pa e devoa cutuillet evelse eun nebeut bleuniou, e reas gantho eun tamig garlantez pe gurunen, hag ez eas da gaout eur bez ha ne voa varnezhan nemet taoualc'h hag eur groazic coat en he benn. Lacat a reaz he c'hurunen bleuniou oc'h ar groas, ha neuze e taoulinas da bidi, hag e tiruille an daelou puil euz he daoulagad.

Bez'e voa gouscoude eun all er vered. Eun Itron iaouanc a ioa o pidi var bez eur vere'hig e doa nevez collet, eur vere'hig penherez. An Itron-ze e devoa evesseat oc'h ar vere'h ma comzomp anezhi, ha pa he guelaz o vouela var ar bez e teuas d'he c'haout :

— Petra rit aze, va merc'h, emezhi?

— Va mam eo, eme ar vere'hig; ha ne ellas lavaret ken.

— A beleac'h eo deut ar bleuniou-ze ganoc'h?

— O Itron, na lavarit guer, en hany Done! Me, n'em eus den var an douar; ama hag ahont e roer din eun tam bara dre druez ouzin; ha gouscoude em oa c'hoant da zigas eur fleuren bennag d'am mam!

An Itron a zirollaz ive da vouela, hag a lamas da boket d'ar vere'hig. Credabl eo e deuz ar vere'h cavet eur vam eleac'h an hini a ioa eno er bez, hag an Itron eur vere'h eleac'h an hini e devoa collet. G. M.

Marvailhou. — N'eus ket pell e velet eun den oc'h ober tro kear, eur mean gantha dindan he gazel. Unan bennag a c'houlennas digantha petra en doa sonet da ober gant ar mean-ze. Ah! emezhan, me am euz eun ti da verza, hag e clascan ama unan bennag d'he brenn; hag evelse em eus digasset eur mean euz an ti ganen evit diskuez pe seurt danvezzo enha!

Eun ofiser euz a zouavet ar pap a ioa torret he c'hag, gant eur voulet. Red e vone troc'h ar c'hag gouliet. Epad ma labourer ar vedesinet, mevel an ofiser a vouele. An ofiser a lavaraz : sell hema an diot-ma o vouela. Ne ket gouela, c'hoarzin eo a dlefez, rag iviziken n'e pe zo nemet eur votez da spura! G. M.

PRIZ AN ED.

KEMPER. — 7 kerzu.		PONT-NABAT. — 5 kerzu.	
Priz ar c'hant tur.		Priz ar c'hant tur.	
Guinis.	47 lur, 43 c.	Guinis.	47 lur, 92 c.
Segal.	43 lur, 60 c.	Segal.	43 lur, 54 c.
Eiz.	40 lur, 56 c.	Eiz.	41 lur, 50 c.
Ed-du.	8 lur, 38 c.	Ed-du.	9 lur, 79 c.
Kerc'h.	40 lur, 47 c.	Kerc'h.	44 lur, 38 c.
Avalou-douar 6 lur, 25 c.		Avalou-douar 5 lur, 25 c.	

Ar Gerant: AR DE KBRANGAL.
Kemper, moulet gant AR DE KBRANGAL, Moutter an Escopli.

— Nan, mes evit senti oc'h Doue hag oc'h an ilis.
— Asa, asa, pebez henor deomp-ni hirio leina e kichen eur c'hristen ker mad! ha pep hini euz arganfardet da lavaret he bez, ha da zistaga eur bom goaperez bennag.

— C'hoarzit ha goapait kement ha ma kerot, eme an den iaouank; me ne spontin ket rag ho comzou.

— Oh! oh! eme an hini en doa comzet outhan da guenta, c'hui a zalc'h d'o creden; mes an aviel a lavar dibri ar pez a gaver!

— A zo guir, hoguen ma cac'h bouet contamet, he zibri a rafac'h-hu?

— Ne ket ar memes tra; ama ez eus kig iac'h ha ne ket bouet contamet eo.

— Dibri kigne deo netra, mes terri eur gourc'hemen; hoguen terri eur gourc'hemen a ro ar maro d'an ene evel ma ro kik contamet ar maro d'ar c'horf.

— Bah! ne ket gant ar pez a ia er c'horf eo e vez saotret an ene.

— Nan? C'hui a zo marc'hadour guin, ha ne ket?

— Ia.

— Bez' ez eus ganeoc'h aze en ho sam meur a seurt guin da rei da dauva.

— Ia, bez' ez eus.

— Mad, lakeomp e teufe unan berinag en nos-ma da efa ar guin-ze, ne gaf ket deoc'h e rafe droug ebet?

— Ne ket er memes tra; an dra-ze a ve eul laeroni.

— Guir eo. Hoguen neuze-ta ar pez a ia er c'horf a ell souilla an ene.

Ma teprac'h bete beza elan, ma c'hefac'h bete ruilla var ar pave, lavaret a rafac'h c'hoas ne ve ket saotret an ene gant ar pez a ia er c'horf?

Ar c'hanfard ama a vone hale'h he c'hinou, rag guelet a rea he vignonet zoken o c'hoarzin dezhan. Gouscoude evel evit diskuez n'oa ket red dezhan plega ma carje, e troc'has c'hoaz eur pez pastel guik, e tiscargaz eur verennad vin hag he lonkaz en eur c'houzougad. e roas eun taol troad da eur c'hi a ioa dindan an daol, hag e tistroaz oc'h an den iaouank en eur lavaret : Clevit, ma lavar ho creden deoc'h; gra vijel, va hini a lavar din-me; gra frico pa elli.

An den taouank ne lavaraz guer, mes guelver a reas dioc'h-tu ar mevel a voa oc'h ho zervicha.

— Potr, emezhan, digas din eur gosten lene.

Ar rederien hent a zavaz oll ho fri en ear. Sell, sell, emezho, petra, sevel a ra keus gantha? Gounezet eo ganeomp?

Ar gosten lene a denaz, hag an den iaouank a c'halvaz ar c'hi, hag he roas dezhan, en eur lavaret d'ar c'hanfard: hema ive so he greden: gra frico pa elli! hag e guirionez ar c'hi ne reas ket ar figuz, hag a loncaz ar gosten en eur c'hinaouat.

Eno neuze e savaz eur c'hoarz divar goust ar c'hanfard; hoguen ne ouzon ket hag hen en devezo tennet frouez euz ar guentel-ze roet dezhan ha d'he gamaradet.

« Ho mab al labourer war he zaoulin stouet,
 « A vintin bet ann noz ne ra meid huanadi,
 « A vintin bet ann noz ema oc'h ho pedi.
 Trec'het eo gand eur gomz kaloun ar vamm dener.
 « Digassit d'am falez va mab al labourer,
 « A lavar ar Veré bez. — Hag ann elez fidel,
 Ho diwaskel digor, dre urz ar vamm zantel,
 A ziskenn e Karmez, a sav al labourer,
 Hag hen doug gand evez enn ouabr euz ann amzer.
 E-berr, dreist ar c'hoummoul, dirag he zaoulagad,
 Ann donar vihana hag a seblant pellaat.
 Pa dosta d'an heol, he lagad a vrumenn,
 Ha ne wel mui netra, pe e vel pe tra gwen.
 Doughet gand ann Elez, dindan ho diwaskel,
 E' pign da lein ann Env, buanoc'h vit ann avel.
 Ann oriou alaouret euz ti he vamm dener,
 A zigor ho-unan evit hen dighemer.
 Chom a ra saouzanet o welout ar Palez,
 Hag ann enor a rer da Vari ar Veré liez.
 He galoun leun a joa, he ben izel pleghet,
 Beuzet el levencz, ne ra mui mann e-bed.
 Mes a zivar he zron, ar vamm karantezus,
 Her gwel hag e deuz sonj euz ar c'homziou klemmuz,
 En deuz enn he c'hlaç'har lavaret a vintin,
 E Karmez bennighet, stouet war he zaoulin.
 « N'hoc'h euz ket, eme-z-hil, kollet va c'harantez,
 « Mar d'int marw ho kwenan a oa ho levencz,
 « Me laro d'e-hoc'h perak. — Wartene divezan,
 « E pardon braz Kergrist, enn dilost euz anti han,
 « Ho mab ken dibouellet ha ken leun a fonghe,
 « En deuz, dre zispriantz evit va mab-Doue
 « Doughet er procession he dok war korn he ben,
 « Sitejet va banniel er fang hag er vouillen,
 « Roet gwell-skouer d'ann holl; ha gand he g'enseur ted,
 « Kemeret e Kergrist plas mezuz ar juiffed.
 « Setu perak, va mab, evit kelenn ann holl,
 « Ho kwenan goude-ze a zo eat holl da goll.
 « Sonj avad a zalc'hann e teuet d'am fardon,
 « Hag hoc'h euz a-vepred va c'harret a galon.
 « Ho mab-hen he-unan mantret gand ar glac'har,
 « A skuil brema daerou ken na c'hleb ann donar;
 « E-harz treid va imaj e Karmez bennighet,
 « Am ped d'ober he beoc'h gant va mab offanset.
 « Ebarz ann deiz kaer-man, ann holl drong en deuz greet
 « Gant va mab ha ganen a zo ankounac'heet.
 (1) Ar pez a lenner ar ghentel-man ne ket gwir,
 Eur gonchen devot eo, ha netra ken. M. D. A. G.

Hano ar Zent evit ar Sizun-ma.
 DILLON 23 Kerzu. — Sant Gregor Taumaturj, Escop.
 DILLON 24. — Sant Gervasi, Sant Prothas, Sant Nedelek. Iun ha vijet.
 DILLON 25. — Guinevez, HOR ZALVER
 JESUS-CHRIST 26. — Sant Stefan, kenta Merzer.
 DIRGUENER 27. — Sant Jan, Abostol hag Avicler.

DISSADORN 28. — An Inosantet Santel, Merzerien.
 DISSUL 29. — Ar sul en Eisev, Nedelek.

An Abostol hirio :
 Hel lavaret a ran doc'h e kibit ha ma zeo an heritour
 buguel, ne deo tam distiennvel dioc'h eñ servicher,
 daoust ma zeo an darvezon dezhan, mes gouarnet eo
 gant goardou ha culatorien bete ma figouez an amzer
 merket gant he dad.
 Evelse pa voamp e hoas bugale, e voamp dindan al
 lezen guenta, n'or boa nemet ar c'heuteliou kenta roet
 gant Doue d'ar bed. Mes pa eo deut ar mare, Doue en
 deus digaset he vap, ganet euz eur vaduez, ganet sujet
 d'al lezen, evit prena ar re a ioa dindan al lezen evit
 hor sevel da renk bugale Doue.
 Hoguen evel m'emaoc'h e reng ar vugale, Doue en
 deus digaset en ho calonou speret he vap pehini ha jaca
 da grial : ABRA, va zad. Rag-ze ta ne doc'h mui servi-
 cherien, mes bugale. Ha mar doc'h bugale, ez oc'h ive
 heritourien da Zoue dre Jesus-Christ.

Lizer Sant Paul da gristenien Galat. IV. 1. G. M. M.

KELEIER.

An Aotrou Seznez, beleg ti scol Sant Jorj, so hanvet
 beleg ar prizon, e Brest.

Al listen digor e ti an Aotrou De Kerangal evit hon
 Tad Santel ar Pap, a zao brema da ugent mil tri c'hanf.
 pemp lur ha daouguent. (20345 lur.)

Etouez ar re o deus roet er sizun-ma, e velomp unan
 hag en deus roet trizee cant antercant lur. (1350 lur.)
 Eun tad eo hag en deus daou vap e servich ar Pap. Gue-
 let a reomp enn all hag en deus roet pemp cant lur evit
 lacat eur zoudart en arme ar Pap, ha kementse ep en
 em rei da anaout.

Hor pidi a rer da lacat er gazetenn ar pez zo anna var-
 lere'h :

- Euz a barrez Plounevez-Lochrist ez eus digasset un
 cant scoet savet en eur gwest great evit hon Tad-Santel
 ar Pap.
- An Aotrou Person. 100 lur.
- An Aotrou Cam vikel. 20
- An Aotrou Cann vikel. 20
- An Aotrou Cologner vikel. 20

Evel ma tigoror er sizun ma d'ar veachourien an hent
 houarn etre Castellin ha Landerne, ez an da veica ana
 da be-heur e tiblase pep trem.

Euz a Landerne e tiblase tri drein bendez.
 Unan (an trein post.) da 8 h. 35. dioc'h ar mintin.
 Eun all da 1h. 50 m. goude creiseidz.
 Eun trede da 8 h. 20 m. dioc'h an noz.

Landerne e tiguezo.
 Eun trein da 8 h. 16 m. dioc'h ar mintin.
 Eun all da 4 h. 19 m. dioc'h an noz.
 Eun trede da 10 h. 42 m. dioc'h an noz.

An treiniou-ze a dneteno dre Guemper :
 O vont etrezeg Naohet.
 Ar c'henta da 10 h. 26. m. dioc'h ar mintin.
 An eil da 4 h. 40 m. dioc'h an noz.
 An trede da 10 h. 22 m. dioc'h an noz.
 O vont etrezeg Brest.
 Ar c'henta da 5 h. 30 m. dioc'h ar mintin.
 An eil da 2 h. 4 m. dioc'h an noz.
 An trede da 8 h. 10 m. dioc'h an noz.

An ed so keret adarre abaoec eun deg dervez bennag.
 Kementse a c'horozemp, eme Gazeten ar Meziou,
 rag gouzout a reamp ne voa ket bet an eost cre avoalc'h
 e nep leac'h evit ma c'halje au ed dont da veza marc'had
 mad.

E cals lec'hiou euz a Frans eo caletoc'h ar goan evit
 he Breiz-izel. Clevet a reomp ez euz brema, e meur a
 garter, eur guiscat mad a ere'h.

E meur a garter euz a Frans e testumer cals kistin, eme
 Gazeten ar Meziou, hag evel ma zeo bet dister an eost-ze,
 kementse a rei ma vezo ive berroc'h an ed ; rag e carte-
 riou zo, evel ma zeo ar menezioù tost da Limoj, da Vi-
 vier, hag ive er Forez, ar goueriadet a vef couls lavaret
 gant kistin. Amzer zo bet ne zebret a vara dre eno nemet
 da zil ha da c'houel. D'an derveziou pemdez ne zebret
 nemet kistin hag eun tam kig moc'h bennag. E Breiz
 ive, e lec'hiennoù, e tebrer cals kistin. Petra bennag ma
 tebrer cals kistin e Frans, e verzer ive cals da gas d'ar
 broiou all. Er bloas tremenet (1866) ez euz eat euz a
 Frans d'ar broiou diaveas pevar milion cant daouzeg
 mil nao c'hant seiteg ha triuguent pouezellat kistin.
 (Quintaux.)

JARDINER AN AOTROU OLIER.

An Aotrou Olier, beleg gouezieg ha santel, en doa
 comanset, e Issy, e kichen Paris, sicouret gant beleien
 all gouezieg evel dan, da scolia glouer iaouane ha d'ho
 lacat e doare da veza belcien vad ha caloneg. Issy a voa
 dezhan, ha pa voue hanvet person Sant Sulpis, e talc'haz
 Issy pehini a voue ar c'hrizien euz a glouerdi brudet
 Sant Sulpis.

E Issy, an Aotrou Olier en devoa eur jardin gaer hag
 a voa labourer gant eun den hanvet Simon, a reat anezhan
 peurlieusa an hini coz, ar potr coz ; hag e guirionez
 bez'en doa eur rencat mad a vloaveziou. Chom a rea en
 eun tiic a gostez eleac'h ne voa nemethan hag he c'hreg
 Jenof. Ac'hano e tarempredent ar c'hlouerdi evit cas
 dre ma veze izom, ar pez a zave er jardin.
 Pa zea an Aotrou Olier di gant he glouer, ho leze da

guemeret ho chat er jardin, da vont adreuz ha d'ho
 evel ma carient. Ha pa vef bresset eun tam doua, sou-
 nezet bennag, ha pa vef touret eun tam doua, sou-
 guezenn bennag, ne lavare gant Simon avad, ha d'ho
 Cridi a ran e vef he guelloc'h gantha beza bresset
 unan evit guelloc'h bressa n'ora en he jardin. E un
 galon oa evithan guelloc'h glouer var he dro. An deuz
 rea dreist oñ poan dezhan, oa clevet avechon ober
 coz anezhan. Gouscoude e cleve aliez lavaret anezhan,
 potr coz, hini coz, den coz ; ar pez hen lakea alio da
 dronsa he vuzellou.

Jenof, evel calz euz ar merc'hed, a ziskueze e voa
 a vouenn hor mam guenta Eva. Fallont a rea dezhan
 gouzout kement a dremene en he zi hag er menez
 c'hlouerdi couls hag e leac'h all. An Aotrou Olier
 veze e Issy, a zestume bennoz he glouer en eur zad
 hag eno ne lezet den all ebet da vout da velet na da clevet
 petra dremene. Kementse a lakea nec'het Jenof. Gier
 devoa goulenn digant Simon, ha digant re all, petra a
 eno an Aotrou Olier hag he glouer iaouane, den ne
 hen lavaret dezhi. Gouscoude ar c'heas jardiner
 hade ket gant an ioul gouzout petra a reat er zal-ze.
 Ket ma vije curius Jenof, mes c'hoant gouzout an dra
 e devoa. Evit terri he c'hoant, setu hi ha caout tro da
 dremen eun dervez ebet d'ar zal, hag en em lacat da
 zilaou dre doul an alc'hoer. Ha petra glevas, chustenion !

An Aotrou Olier a lavare d'he glouer iaouane, red eo
 distruja an den coz ! Red eo en em zizober euz an den coz !
 Da lavaret eo, euz ar nec'het, euz an tech, d'ar nec'het
 evit en em yisca euz an den nevez, euz a Jesus-Christ.

Hoguen Jenof ne devoa ket silaquet an c'hoant d'he
 veza-ma. Ne devoa clevet nemet ar c'hoant
 red eo en em zizober euz an den coz, hag he achao-
 strauillet hag evel pa e divije collet he skiant da lavaret
 d'he fried e telle d'ho mestr, lacat ar glouer abudic
 d'he zistruja. Simon a ioa neuze en he di, rag n'oa det-
 iac'h eun nebeut derveziou a ioa. Me ho les da zoug
 pebez abaden a voe ano. Jenof a gis, a velle, na g'it
 nude, rag hi ne gave ket dezhi e voa eun gan he jardiner,
 nag e voa deut ar mare den em dizober anezhan. Hout !
 An Aotrou Olier, eur mestr ker mad, reo den gant
 guemerent evit euzant lavaret ha ouevels a d'ho
 hevelep all d'ar glouer ! Ha gouscoude n'oa donet abudic
 lavaret en doa freaz avoalc'h : red eo en em zizober euz
 an den coz ! Ha n'oa den coz ebet en ti nemet ar jardiner !

Simon ne voa-nemeur digoroc'h he speret evit hini
 Jenof. Cridi a reaz ive couls hag hi e voa c'hoant da ober
 he dro dezhan. Ar pez a reas alioz an den coz n'ha
 startoc'h ar pez a lavare he c'hreg, eo ma en doa liez a
 vech clevet ar glouer oc'h he c'hervel, ar jardiner
 ar jardiner eoz ; ha neuze, eun dervez pennaz diaraog,
 en eur dremen dre ar jardin an Aotrou Olier a voa chomat
 a za da zellet oc'h diou pe deir guezen g'it nemet
 a frouez, hag en doa lavaret dezhan, Simon, red eo
 tenna ar guez-ze so eat re goz, ha lacat guez iaouane
 ho leac'h ! Simon en doa grosmolet : oh ia ! Setu aze
 petra vez great d'ar re goz.... Mes an Aotrou Olier n'oa

ne c'houlenne ken nemet e tistroje oc'h Doue. Diou c'hoar iaouang am euz ha ne eanent da bidi evithan, ha me, daou vloas zo, am oa great al le da Zoue en em laçen etouez zouavet ar Pap, mar marve va zad e guir gristen. Abaoué eun nebeut dervezion gouscoude e teue eur beleg coz d'he velet, ha va zad en em blije o cozeal gantha; mes lavaret a rea ato ne gofessaje morse. Etre daou oll dud an ti a bede evithan.

Derc'hent he varo, ar beleg coz a deuaz adarre d'he velet. Ar beleg, o velet e fallae, en em lakeaz, ep lavaret hano a gofession, da gomz dezhan a zevri, da ober goulennoù outhan divarbenn ar stad euz he goustians. An hini clan à roas dezhan da anaout ar stad euz he ene, a zisclerías tost da vad an oll fazion euz he vuez. Neuze ar beleg a lavaras dezhan :

— Grit eun act a contrition euz hoc'h oll bec'hejou.

— Petra? confessaat ac'hianon eo oc'h eus great?

— Ia, va breur.

— Petra? ne ket diessoc'h evit an dra-ze? Gortozit, gortozit! eur dra bennag am eus c'hoas da lavaret deoc'h. Neuze an hini clan a reaz eur gofession piz euz he oll vuez gant he oll anaoudiguez, ha gant ar brassa feiz.

Kement ma a ioa dioc'h ar mitin. An den kez a ioa chenchet oll. Goude creisdeiz e pede, e trugareka Doue, e veske he zaelou gant re ar beleg ha tud he di. He unan e c'houlennaz he zoue hag an nouen.

Ouspen-ze e c'halvaz he vap a ioa er scolach, hag e lavaras dezhan : « Va map, gouzout a ran oc'h eus c'hoant da vont da arme ar Pap; mad, it d'en em lakat ereng he zouavet pemzeg dez goude vamaro. » Ha pemzeg dez goude, ar map iaouang a iea da Rom. Escop Arras her c'hassas da gaout an tad santel da behini e lavaras; « Tad santel, me ho ped da receo eur prezant a ra deoc'h eur vam vad; he map eo a guinnig deoc'h evit servicha etouez ar zouavet.

Ar Pap a reaz eur muschoarz, hag a lavaras d'ar paotr:

— Re iaouanc oc'h, em euz aoun, va map, ne recever ket araog seitig vloas:

Ar potr en devoue eun tamig aoun, hag a respontas :

— Tad Santel, ma c'helffen da viana beza recevet etouez ho mevelloù.

— Mad, mad, eme ar Pap, ho receo a raimp evelato.

Hag ar c'hrenn-botr zo hirio eur zouav dispar.

Toulouz. — Er sizun dremenet e voa er guær a Dou-louz eur plac'h iaouanc paour euz a Spagn bet o pardona e Rom hag e Jeruzalem. Ar plac'h iaouanc-ze hanvet Saturnina Lopez, a ioa mated e kaer Madrid. Clan oa bet gant ar c'holera, hag o veza dare da vervel, e devoa great al le da Zoue da vont var droad euz a Vadrid da Rom, hag euz a Rom da Jeruzalem, ma roe Doue dezhi ar iec'het. Parea a reaz, ha kerkent, evit derc'hel mad d'he guer, e kemeraz he baz a birc'hirinez, hag en em lakeaz en hent, ep ken tra nemet he rozera en he dorn hag he fizians e Doue. Evelse-ta he unan, ep den d'he heul na peadra, nemet eun tam paper evit diskuez oa bet ba-

dezet; hag eun tam paper all evit diskuez e doa servichet mad he mistri, e tiblasaz euz a Vadrid d'an trivac'h a vis meurs. D'ar guenta viz even, goude tri mis bale ha skuider e tigouezaz e Toulouz.

Goude beza bet eun nebeut dervezion er guær-ze, goude beza bet o pidi var bez Sant Saturnin, he faeron, ez eaz adarre en hent d'ar pevar varnugent a viz even, evit mont da Varseil hag ac'hano da Rom.

Ne ve ket eas rei da anaout pegument e tridaz he c'halon, pe guer braz e voue he laouenidiguez pa en em velaz e Rom.

« Ken euruz en em gaven, emezhi, ma c'hancouna-c'hajon va oll skuider. Goude beza bet an eurvad da glevet eun oferen lavaret gant hon Tad Santel ar Pap he unan, em bije caret lavaret neuze evel an den coz Simeon guehall : Brema, ô va Doue, e lesot ho servicherez da vervel e peoc'h, pa o deus bet he daoulagad an-heur da velet e Rom ar sclerijen-ze a zilvidiguez a sclerra ar bed oll. »

N'oa ket echu gouscoude beach Saturnina e Rom. Da Jeruzalem e devoa da vont ive. Setu-hi ta oc'h en em lacat adarre en hent, ha d'an deg a viz eost e tigoueze er guær santel.

Eno da guenta he c'halon a voue mantret; eur velconi vraz a deuas da dreuzi he ene, o velet e pe stad distruch em ar guær reuzendik-ze. He encrez hag he rann galon a ias kuit gouscoude a nebeudou. Eur miz e chomaz er guær-ze. Guelet e deus kement so eno da velet; bet eo e kement corn, e kement leac'h a zigas eur zonch bennag da eun ene christen. Da venez calvar gouscoude, d'ar jardin olivez ha da vez hor Zalver eo ez ea aliessa. Goude tremen seis miz o vale, Saturnina so distroet da Douloz, ha goude beza tremenet pevar dervez er guær-ze, eo eat en dro da Vadrid, ato var droad ha dre ar memes hent.

Petra ma ell ket da ober eun ene hag e deus feiz?

Pa edo o vont e beach, tud vad euz a Douloz o devoa roet eun dra bennag da Saturnina evit he sicour da ober he felerinach. Brema pa zeo deuten dro, e deus paet he dile, ne ket gant arc'hant, rag ne deus ket, mes roet e deus d'he madoberourien eun nebeut poultren destumet var bez hor Zalver ha var menez Calvar, frag eun delien bennag euz ar guez olivez a so bet testou euz a agoni hag a c'hoezen c'hoad Jesus-Christ.

Autrich. — En Autrich e veler ar feiz o tihuna, hag ar c'hoant da rei sicour d'hon Tad Santel ar Pap o sevel e calonou ar gristenien. Guelet a rer ar brinset hag ar brinsetzet o rei ho ofrans evit izomou an Tad Santel. Guelet a rer zoken prinset ha n'int ket catoliked, o rei gouscoude sommou arc'hant evit caout perz en ober mad-ze e kenver cador Sant Per. N'em eus ket izom da lavaret ne jom ket an Eskeb varlerc'h ar brinset, hag ez int er c'hontrol ar re guenta o rei ar skuer. G. M.

HISTOR ZANTEL

TENNET DIVAR BEVR ANY EKOD.

(C'HOUEC'HVED PENNAD VAR-N-UGHENT).

Urzhou Doue divarbenn ar profou da ober evit sevel ann Tabernakl, ober Arc'h ar Ghevredighez hag ann traou-all.

(Exod XXXV.)

Moizes o veza dastumet holl vugale Israël, a lavaras d'ezho : chetu ama ar pez en deuz goure'hemenet ann Aotrou d'in epad ma oann gant-han var ar menez : livirit emez-han d'am bobl : likiit a gostez enn ho tiez ar profou kenta hoc'h euz da ober d'ann Aotrou. Peb-unan ho c'hennigo d'ann Aotrou a ioul frank hag euz a greiz he galoun. Kenniga a reot aour, arc'hant hag arem. Mezer pers-glaz, mezer monk, skarlek divech-livet, lin fin ha bleo ghev. Krec'hin meod livet e ruz, ha krec'hin al limestret, ha koat setim : eol da ellumi ar c'hleuzeuriou, arom kre da ober ounganchou, ha pep seurt louzeier c'houes vad. Mein onix, ha mein all priciuz evit goarnissa ann Ephod hag ar Rational.

Ar re ac'hanoc'h a zo gouisiek da ober eun dra, ra zeuint da ober ar pez en deuz goure'hemenet ann Aotrou. Ann Tabernakl, dioue'h ar skouer a zo bet diskouezet d'in var ar menez. Ann Arc'h (hanvet Arc'h ar ghevredighez pe ann Arc'h a allianz.) Taol ann daouzek bara kennighet. Ar c'hantolor a zeiz brank. Aoter vihan al louzeier c'houez-vad; hag Aoter ar zakrifisou-losk. Stignou pe ridosiou ar c'hlostr, a vezo ann Tabernakl enn he greiz; gouel vraz dor ann Tabernakl, ha dillad ar veleien. Enn eur ghev, ar sanctual deread a c'houlenn ann Aotrou digan-eomp evit ma choumo enn hor c'hreiz hervez ma en deuz he ziskleriet.

(Ann traou-ze holl, ha kalz traou all hag a zell ouc'h lidou ar relijion, a zo bet divizet gant Doue da Voizes epad ma oa var ar menez. Ar munudach euz ann traou-ze a ve re hir ho lakaat ama; ho c'havout a reer el levr ar Skrituriou Sakr.)

Pa oe eat ar bobl kuit euz a zirak Moizes, e kennigont d'ann Aotrou gant eur galoun brompt ha leun a zeoliez, ar profou kenta evit ann Tabernakl, ha kement a oa ret da gaout evit al lid, hag ann dillad santel.

Ar c'hoazed hag ar merc'hed a roaz ho chadennoigou breac'h, ho c'hleierigou diskouarn, ho bizeier, ho braoigou dour-deou. Ann holl listri aour a oe lekeat a gostez, evit beza kennighet e profou d'ann Aotrou. Ar re ho doa mezer perz-glaz, ha monk, ha skarlek divech livet, krec'hin meod livet e ruz, ha krec'hin al limestret, metal arc'hant hag arem, ho c'hennigaz d'ann Aotrou, kerkoulz hag ar c'hoat setim da ober ar pez a oa da ober.

Ar merc'hed desket kaer a roaz ivez ann traou ho doa nezet ha nadozet pe brodet, evit ober ar stignou hag ar vouel vraz. Prinset ar bobl a ghennigaz mein onix ha mein priciuz all evit ober ann Ephod hag ar Rational. Rei a rejont ivez louzeier c'houes vad, hag eol da ellumi ar c'hleuzeuriou pe al lamprou ha da ober ann ounganchou; hag ann ezanz da deurel c'houes vad meurbed.

Holl vugale Israël a roaz ar profou-ze diann Aotrou Doue a galoun vad hag anezho ho-unan.

Neuze Moizes a lavaras da vugale Israël : setu ann Aotrou en deuz galvet dre he hano Beseleel map Uri, euz a veuriad Judaz. Hag he garghet en deuz a spered Doue, a furnez, a entetidighez, a vouzighez hag a bep skiant; evit ijigna hag ober pep labour en aour, en arc'hant hag en arem. Evit labourat ar vein priciuz ha kilvizia ar c'hoat. Kement tra a hell eur micherour da ober en deuz lekeat d'ezhan enn he spered.

Galvet en deuz ivez Ohiab, map Akisamek, euz a veuriad Dan. Ho c'harghet en deuz ho daou a furnez, evit ma raint holl labourou ar munuzer, ar guader, hag ar brouder. Evit ma raint kement seurt labourou a zo bet great bete vrema enn doare-ze, hag ma ijignit labourou nevez.

Beseleel hag Ohiab, hag ann holl dud ouisiek da bere en doa roet Doue furnez hag entetidighez var ann traou a oa da ober, en em ghemeraz da labourat. Ha Moizes a lekeaz etre ho daouarn holl roou pe holl brezanehou bugale Israël. Hag evel ma en em roent a zoare da gas al labour a-raok, ar bobl a zeue benneg da vintin da ober profou nevez. Ken a oe ret d'ar micherourien mont da gavout Moizes, hag e leverjont d'ezhan : kenniga a ra ar bobl muioc'h evit nevez euz euzom. Moizes eta a reaz embann na zeue muioc'h goaz na maouez da zigas profou evit ar sanctual. Hag evelse ec'h enanaz ann dud da ober ho c'hennigo. Hag ann holl dud se leun ho c'halon a furnez evit ober labourou ann Tabernakl, ho greaz hervez ann diviz roet gant Doue da Voizes var venez Sinai.

(Plijadur a ra d'ar spered ha d'ar galoun guelout pobl Doue o tigas he brofou da Voizes gant kement a vall fia kement a gargentez. Kristemen vad! na gollit ket ar zonz euz ar skouer gaer-ze pa vezo eun dra bennag da ober enn hoc'h Iliz. Ralc Tabernakl al lezen goz, gant ann holl draou a oa en han, ne oa ket ket santel hag hon ilizou-ni. Ne oa nemet eur skend hag eun droug euz hoc'h iliz, e pehini eme Doue e guinnoez noz-deiz e Sakramant ann Aoter. Tud paour divar ar maou, na n'oc'h ket evit lakaat kement-all a aour hag a arc'hant endro d'hoc'h iliz, bezit hoc'h unan he c'hoar aor namant dre ho teoliez, dre ho paffeted enn hi ken agork ken a spered; dreist pep tra dre hoc'h alled skoueriz d'en em gavout enn hi bep sul ha bep gouel, evit adon Doue ken-etre-z-hoc'h, ha gant ho persoun, ken euruz oc'h ho kuelont dastumet endro d'ezhan.)

MISSION GOAEN (Audiern)

(EIL PENNAD.)

Goude ar brezeguen gaer ma on eus comzet anezhi, e tistrojomp d'an ilis en eur gana cantrou, hag en eur sonjal en traou caer hon doa clevet.

— Hag ar vugale vihan, n'ho deus bet mission ebet?

— D'ar sadorn varlerc'h e oa mission ar vugale vihan. An Aotrou Lamark en doa lavaret digas d'ezhan

an holl vugal e ho doa graet pask ebet, ha dioc'h m'am beus elevet, ec'h en em gavas var he dro eun toullat mad. Me ne oar ket bet o velet, va maouez avad a oa bet gant Eugenie.

— Anaout mad a ran anezhi : setu ebo eur plac' hic hag e deus speret.
— Ree, Jackez, evit eur plac' hic eus he oad, aon'am beus n'a ve ket coz.

Pa oa deut d'ar guer e oa laouen evel an eol hag e teuas d'am c'haout.

- Tad, emezhi, me zo bet er mission.
- Ia va merc' hic.
- Eno e oa bugale aleiz, aleiz.
- Ac'han'ta petra peus gulet.
- M'em beus desket cana : Sant Joseph pried Mari.
- Hag ar verc'h en em lacaat d'a gana evel eun eostic.

— Goude, tad, an tad Missioner en deus goulennet catekis diganeomp, ennez avad a oar ober catekis ; ne oa da lavaret nemet ia pe nan.

- Me zo sur e peus lavaret ia pa ranket lavaret nan.
- ... Ia, eur vech, mez ar re all o doa lavaret ive.
- Ha goude ?
- Goude, tad, eo bet diskuezet deomp an tolenno.

M'em beus gulet an diaoul gant he fore'h houarn ; hennec so divalo avad ! Ha neuze eul lapous eul lost bras ha caer d'ezhan ; ha neuze eun toussec ; ha neuze eun oc'h ; ha neuze eur bidao ; ha neuze eur velfeden !

An oc'h eo ar gourmandis, ar bidao eo ar pec'het mezus ; hag an hini a raa ar pec'het mezus, tad, a vez ar bidao en he galon, hag an hini a raa re govat a ves an oc'h, hag an hini a vez diegus d'a sevel d'eus ar mintiu, a vez ar velfeden. Me, tad, a savo mintin brema avad, gant aon na deuffe ar velfeden em c'halon. Ha neuze, tad, goude ez eus roet deomp bep a vetalen ; sell tad, va mam a lakei anezhi d'inn en dro d'am gouzoug, ha me, tad, a voucho dezhi bep noz ha bep mintin.

Setu a-ze traou diste, bugaleach mar kerez, mez ar vugaligou-ze o do sonj en ho mission epad ho buez, ha divezatoc'h pa viat, deut d'a veza coz, e tiskueziat ar vetalen-ze d'ho bugale vihan, en eur lavaret : sellit, setu a-ze ar vetalen e doa bet ho mam-goz evit ar mission a oa bet ama pa oaihan evel doc'h.

— Guir, ar d'allaoc'h a leverezi, Ian, m'em beus a-ze c'hoas eun imaj am boad bet digant an Aotrou Person pa oan oc'h ober va fascon, ha ne garfen ket he goll.

— Antrouez e oa an devez diveza hag ive an devez caera euz ar mission.

Arooc an oferen bred, e oa benniguet croas ar mission. D'a nao hetir hanter e sejomp e procession d'a gaout ar groas ; ha pa oamp bodet holl ec'h bars he zroad, an Aotrou Lamark a reas adarre eur brezeguen ; nag a draou caer a lavaraz deomp !

Ar groaz-ma, emezhan, a vezo evit an amzer d'a zont eun testeni eus an traou caer zo bet c'hoarvezet ama,

epad an devezioù tremenet ; ar groaz-ma zigasso sonj deoc'h eus ho mission eus ho resolutionou mad, eur merk eo e kemerit Jesus-Christ evit ho noue ; rac ar groas eo he daniel, Lavaritota holl a votez huel : *evit Jesus-Christ*. Hag holl e leverejomp a bouez hor penn hag a greis hor c'halon steir ginech *evit Jesus-Christ* ; hag hor mouezioù a oar elevet dre bevar c'horn ker.

— Ne oa ket brao d'an diaoul dont d'a glask affer ouzoc'h neuze.

— Nan, diguemeret fall e vije bet, neuze oamp holl d'a Jesus-Christ.

Goude an Aotrou Lamark a zigassas d'a sonj deomp eus ar pez a oa c'hoarvezet e Goayen, brema zeus daou pe dri c'hant vloas.

An tad Mikel Le Nobletz, en deus prezeguet ar feiz dre bevar c'horn hor bro, a deuas ive d'a Voayen, miz ker fall e oa diguemeret ma rañcas mont eun. C'houi a drugare Doue, eme an Aotrou Lamark, n'ho peus ket graet evel ho tadou coz. Nin ive, evel Mikel Le Nobletz, zo deut d'ho caout abers Jesus, evit prezeg deoc'h Croas Jesus-Christ, evit digas deoc'h grassou Jesus-Christ, ha raedall oc'h diredet holl d'hor silaou, da c'houlen diganeomp pardon eus ho pec'hejou, hag hirio emaoch holl en dro d'a Groas Jesus-Christ o c'houlen pardon, evel pa lavarfen evit ho tud coz, hag o touet caret Jesus-Christ betec an huanaden diveza. Bennos Jesus-Christ varnoe'h.

Goude e oa benniguet ar Groas, hag an holl a vouchas dezhi. Ah Jackes, nag a bed o deus goulennet eno gant daelou, pardon, a greiz ho c'halon, da veza bet meur a vech direspert e kever ar groaz !

- Guir e eo bet an Aotrou'n Escop du-ze ?
- Ia, an Aotrou'n Escop en deus bet ar vadelez d'ober deomp an honor da zont d'a serri hor mission.
- Eun tamic lore'h a dlle beza e bourc'hichen Goayen en devez-se ?
- Na petra 'ta. Pell a oa en doa lavaret d'an Aotrou Lamark e vije deut, Daoust ne oa nemet pevar pe bampi mis abaoe ma oa bet evit ar gonfirmation, e felle d'ez han dout adarre, evit rei deomp eur merk nevez euz he garantez. Pa vez hano d'ober plijadur d'eur barrez, pe vad d'ar relijion, an Aotrou'n Escop ne oar ket en em espern. Bennos Doue d'ezhan, abers holl dud Goayen.

An Aotrou Lamark en doa roet ar c'helou mad, an devezioù kenta euz ar mission. Ar brod a redas huan, evelse e oa en devez-se, eun holl tud e Goayen ; biscoaz n'em beus gulet kement all. Caera procession zo bet ! Holl bagou Goayen, hag an holl listri a oa er pors, renket a hed ar c'he, o doa guisket evel pa lavarfen, ho dillat caera ; goloet e oant a *bavillonou* dispag hag a bep seurt liou, hag ar bagou o doa e beg ho guernennou bokedou bleun.

Goude gousperou e oa lavaret d'an holl disken var ar c'he. Eno e oa savet ar brocession ha renket an dud evel ar zul arao, hag e sejomp en eur gana penn-da-benn gant ribl ar mor, evit mont d'a eun oter v'rao, savet

var eun daehen y lualloch evit ar c'he. Aotrou'n Escop en he zorn ; a mennigasi ar mon, al listri, ar bagou hag an dud a oar mañhoz. M'bricaret enidi, fañ lioll vaantolodet a dride ho c'halon en he c'hreiz. Goude e pignjomp adarre e procession betec an ilisi ; hag a baeo reñae venediction, an Aotrou'n Escop a reas eur brezeguen gallec. Evel ne ouzon ket ar gallec, ne ouzon ket petra en d'eus lavaret. Ar re a ouie ar gallec a lavare en doa graet eur brezeguen gaer dreist. Goude e reas deomp ar venediction evel ma ro hen Tad Santel ar Pab e uan, hag an holl a en em dennas d'ar guer laouen bras.

D'al lun e oa mission ar re varo. Nag a bedennou, nag a gommunionou santel en deus bet an anaon, er mintinyez-se ! Goude beza ganet en ilis eur *servich* hag an oferen evit an eneoù zo eet d'a anaon eus Goayen, e sejomp adarre e procession d'ar veret hep a dam ascorn ganeomp en hon dom. Er veret e oa graet eun toull don ha ledan, evit diguemeret relegou ar re varo. En dro d'ar bez-ze e oamp destumet. Neuze unan eus ar veleyen a reas deomp eur brezeguen hag a dennas daelou d'eus meur a zaoulagad. Goude oa graet *enterramant* an eskern. Neuze an Aotrou Lamark a lavaraz a vouez huel : *Kristenien, ama dirag relegou ho tud, n'in a lavar ken a-vo deoc'h, er Barados. Raedall an holl, ho daouarn gantho el lae, a lavaraz a bouez ho fenn : Vivent les Missionnaires ! Vivent les Missionnaires ! Vivent les Missionnaires ! Vive Monsieur Lamarque !* Hag an holl a en em taças d'a vouela. Goude beza lavaret eur beden ha scuillet eur berat dour benniguet var bez he dud, pepini a zistroas d'he dy en eur drugarecaat Doue eus ar pez en doa gulet ha elevet.

Setu a-ze, Jackez, petra zo bet a nevez e Goayen, er pemzec devez diveza-ma, ha setu ama en eur ziskuez eun habit carmez hag eur chapelet, hag a zigasso d'a sonj d'inn atao eus va mission benniguet. Pa vezer greijet er guisse, ne ket ret caout aon na rac an avel, na rag ar mor.

— Bennos Doue d'ind'van, plijadur hon deus bet ous d'a glevet.

Goude eur Baden ver, m'ez calonec, an holl a yas d'a gousket e ty Jackez L.

LIZIRI DA DUD DIVAR AR MEAZ.

Da Louiza X. he pehini abir lobaz he merc'h Genovefa d'en em dennas en gouen.

Anaout a ran mad avoualé d' Louiza, caloun eur vam hag an deneridighez e deus em andret he bugale, evit gouzout peghen bras eo da c'hlae har. Genovefa eo da verc'h hena, da vreo'h diou, joausdet an tyeghez ha scouer mad ar barres : ha setu o tond d'hezi eur c'hoant bras d'en em denna varzu an gouen ! Pebes taol cleze, ha pebes rann galoun ! Gouscoude, Louiza, ez out kristenez re vad evit en em losker da veza trec'het gant eun hevelep controliezh.

Hag an n'hoarvezet an azao a renker peaos ar bugale a zo da ghenta da Zoue pehini a laca eun daouarn gant hag eur vam pehini a mest d'olostengant. Ma car, ma caro, pe d'o lammet digant o ive pa blijon d'heza. Rac-se ia, Doue, he ma pije he d'he em glanm'hep dije ghellet pell zo lammat digan-ez da verc'h hena hag e lees e drugarecaat d'he heza losket en doa glichen epad eun nebeudic bloaveziou.

Hoghen, Louiza, ha dalc'het e pije pell e hoas da galounic e dindan da ziouskel ? Ne oa hi ket d'inn oad da fortuna ? Ha ne poa te ket diskuezet d'inn va lez he *habijou-eured* ? Ha douctus bras araoe eur miziu he nac, ar paour keas Genovefa a vije euz da glac he jans matreze pell diouz-it, ha ne pije mui he gulet nemet eur vechig en amzer, da zeis ar pardon, ha da voullargez.

Guir eo avad, e poa lakeat eun da benn d'he dimizi, en eur verouri vaaz bennac eostit d'as kear, da eun den yaouanc fur bennac pehini an dije bet tec'h fall ebet ; sonjal a reas ive matreze caout ar plijadur da velet he bugale, caer eghis an hec'h ha lez he jagad, o sevel stanc enn dro d'hezi, *scit novalla pharum*, eghis ma lavarfe Lahn An Dall. Ne zonjes ket memes e c'helle eur maro trum bennac dont da jagan ar c'haon eno tyeghezic nevez-se, pe e c'helle eur barr amzer bennac dont da lacaat an d'ristidighez el lae, ha an joausdet ; Eñn da speret e poa aozet eur barados, evit da verc'h ; mes lavar d'in-me, pet greg a anavezes euz er barados-se ?

Dre an amzer-ma an dimizioù zo traou chausus : alies e vezer troumple, nag a dud yaouanc pere no deus nemet al liou hag ar skoud euz ar vertus, pere zo preñvedet ho c'halon dre heb seurt visson, ha pere, antronoz ho eured a en em ziskuezar pe ma int ! Nag a c'hragez dilezet ha gual-gasset ! Ha c'hoas, Louiza, ne velomp nemet ar diaveas, rac ar vijonez hag an diabars a glasket da guzall quella ma c'heller.

Hag b'aspen, Louiza, eghis ma lavarfe c'hoas Lahn An Dall, an attanchou a rouessa beude ; cals euz ar re a zimes a rene gortoz euz daou euz tamed meroun ; da c'hedat e trebont *he pe adra* hag evit tec'hato araoe ar baourenhe e reñcon en em denta varzu kear da zere e'hel ho latriy *pe eun tamie comers* ! Eñn, Louiza haour, nag a hoarvezet he vugale ! Nag a hoan pa o gueler o verc'h ! Nag a hoarvezet he vugale divezatoc'h o tisprijout ho c'hever, o c'hellat goal vigjounet hag o rei goal stouet. Nag a hoarvezet he re abred ar maro da sko, yaman anobes Paulou Doue dre eur maleur-all bennac d'hor c'haon da lamour d'hor pec'hejou !

Allas ! ma vije anavezet an oll boan ar gaven eo penn eun tyeghez ; cals a verc'h et gouarret a zontje matreze diou-vech araoe lavans larc'heh ; mas Doue hen deus euzet out o ar c'hoazioù-ze ha ne fell d'heza o diskuez d'an dud yaouanc nemet a' nebeudic a nebeud, evit noumpas o spounta ; rac ar groz-vuya a rene goumit ar barados dre hent ar briedelez. Gouscoude, Louiza, ne

da ket da vurmuri ma fell da Zouesavetei unan euz da vugale dre eun hent doussoc'h ha caeroc'h.

Clevet a ran bemde tud, ha tud a skiant memes, o c'hirvoudi hag o hyouc'hal dustu ma velont eur plac'h yaouanc o redet d'ar gouent; eridi a reont matreze n'eus mui plijadur ebet evit-hi. Gouscoude guel peghen gaé, peghen laonen ec'h en em gav ar plac'h-se dindan he c'hapic-seurez! Peghen trankil eo he c'haloun hag he ene; he yec'het memes a deu crevoc'h créva bemde.

Da vihana, emc de, ma vije eat an eil eus ar merc'het, n'em hije ket cavet ken poanuis; mes Genovefa ! Nann, nann, na me na va goas n'en em gonzolomp biken euz a ghemmen-se.

Allas ! ia, paour keas, er ghis-se ema an traou : Carout a rafflemp ober hon-unan ar partach ha rei da Zoue an distera loden; mes eghis ma eo hén ar mestr, e fell d'ezhan choas; losker a ra gan-heomp ar mein groz ha pigosset hag e kemer ar mein presius hag ar perles evit orn he gurunen.

Rac-se, Louiza, ne peus ken da ober nemet en em rezina, plega da benn hag offri da Zoue ar zacrisis euz da verc'h; ar pez a reoc'h sur, te ha da c'hoas, ha goude-ze e teui ar gonsolasion : rac perac reüs da Zoue ar pez a zo d'hezan; ha pe seurt plijadur e piye o velet da verc'h o vont hag o tond enn da dy, eghis eun dra ha ne ma ket enn he blas, trist ha maleürus eghis eur pesk er meas euz an dour?

Nann, Louisa, ne vezi ket unan euz ar mamou-ze pere a gred caret ho bugale ha ne garont nemet o ho-unan; pere zo leun a dencidighez evit ho merc'h pa zimes hervez ho bolonte, ha pere a daol tan ha moghet pa goums da ghemeret Doue evit pried hag evit lacat ar verc'h paour-ze da bellaat euz ar gouent a lakeont anhezi e danger da vilina he c'har.

An dra-ze zo bet guelet, Louiza : ha meur a vaouez matreze pere ne dint hirio nemet mamou criz ha priejou digaloun, a zo bet guehall merc'het yaouanc fur, galvet da veza eürus er gouent, mæs pere zo bet dimezet a eneb ho bolonte hag a zo brema dizhenor ho lignez abalamour ma int en em droumplet a hent.

Te Louiza, a losko da verc'h da vont d'al leac'h m'he doughen he c'haloun hag enn tu m'he galv an Aotrou Doue; n'he dimezi ket cousto pe gousto, heb vocation, hag evit he brassa maleur. — He roi a ri da Zoue, noum pas enn esperans guelet anhezi divezatoc'h mestrez scol ec'hars da dy, na superiozez enn he c'houent; mes he roi a ri heb an distera *sonj-vanite*, countant braz o velet anhezi o chervicha ar re all enn he c'houent, pe o vont er broion estranjour, hervez bolonte Doue, da zicour ar visionerien. Neuze ma ne deu mui ar guel anhezi d'as laouennaat, he c'haloun ne zoujo ket neubeutoc'h enn-out; neuze ma vand'id he diouvrec'h, he fedennou, da vihana, a gresco evid'out hag a gouezo var da dy eghis ma kouez euz ar mintin, ar gliz var an donar. Neuze ive, o velet da verc'h eürus, o velet da vadou o prosperi, da afferiou o vont mad enn dro, e

renki anzaou penaos Doue ne ghemer james netra digan-heomp heb her paea cant evit unan. O. H.

AR MESSAER BERTELE.

(DIVEZA PENNAD.)

Ar roue Bertele a boanie da zeski ho c'hatekis d'he lapinis, hag evit kementse ar pez en doa clevet guehall gant person Sant Palafin a zervichas cals dezhan. Unan euz a virionezou ar feiz a blije muia d'an dud gouez-ze ca ar virionez euz eur brovidans. Fougue a veze enho pa lavaret dezho e voa Doue bras braz, oll galloudeg, hag en doa soursi anezho; en doa great evitho an heol hag ar stered, ar mor, hag ive an enezen ma edont enhi, hag ar gaera, credabl, a gave dezho a ioa er bed. Ne ouzon ket hag al lapiniz a vije bet laonen ma vije lavaret dezho en devoa Doue soursi ive euz a dud an enezennou all, ho zonc'h ne dea ket keit-ze. Ne velent nemet-ho ho unan. Pell e vije bet Bertele araog m'en divije gallet deski guirionezou al lezen gristen d'he sujidi; hoguen digouezout a reas sicour gantha. Eul lestr a reas pense dirag an enez, ha daou epken euz ar re a ioa varnezhan, eur beleg hag eur c'hrenn baotr, a deuas beo d'an douar. Ar beleg a ioa eur missioner hanvet an tad Ulric, hag ar c'hrennard a ioa mous pe botr keguiner el lestr, hag a reat anezhan Bertrom. An tad Ulric a vouie neun mad hag en doa saveteet var bouez poan avoalc'h, he vuez hag hini ar c'hrenn botr. Bertrom a ioa unan euz ar botredigou paour-ze a gaver ker stang e ruiou Pariz hag a vev den ne voar penauz, ep m'en defe den soursi anezho. O veza cavet fret da vont var al lestr-ze, e voa eat enha evit beza potr keguiner, hag epad ar veach an tad Ulric en doa roet kenteliou dezhan var al lezen gristen, rag ne vouie nemeur a gatekiz, ne anaé nemeur ar guirionezou euz ar feiz.

Kenta a deuz abenn da zeski al lezen gristen, e voue eur verc'h iaouang, hanvet Tala. Lavaret e vije e voa ar verc'h iaouanc-ze ganet a guerent christen, ker buan e teske hag e saoure ar guirionezou euz ar feiz. Servichout a reas cals d'an tad Ulric ha da Verteles evit deski al lezen gristen d'ar merc'het all. Ep dale Tala a voue choazet, a voue an oll evit pried da Verteles, evit rouanez, hag an tad Ulric a reaz an eured gant an oll zolanite a ellet da gaout en enezen-ze.

Bez' o devoue tri buguel hag a varvaz iaouankik; an derzien velen ho zamme, a eller lavaret, dre ma teuent. En enez al lapinet, ar vugale, pa varvent, ne vezent ket lakeat en douar. Great e veze evitho eun doare chapel gant scouirou palmez, hag e creiz ar chapel e lakeat corf ar buguel en he gavel savet daou pe dri droatad dioc'h an douar var bouez peullou.

Evit bugale ar roue hag ar rouanez e voue savet ive eur chapel evelse, hag eno eo e tremene Tala an darn-vuia euz he amzer o pidi hag o lacat bleuniou en dro da gavellou he bugale. Bertele a iea ive alies di evit ober canv d'ar vugaligou-ze en doa roet Doue dezhan, hag en

doa tennet euz ar bed-ma eleac'h n'en doa great nemet ho diskuez.

Eire daou Bertrom en doa aneounac'heat an anapudenez vad a dlhe da Verteles evit an diguemer mad a ioa bet great dezhan en enez. En em lakeat pa e euz dazrougprezeg euz ar roue ha da lacat al lapinis da zavel a enep dezhan. He droiou cam a voue dizoloet, ha tost e voue dezhan beza laket d'ar maro. Bertele gouscoude her pardonas. Mes an drubarderez-ze euz a eun den da behini en doa savetet he vuez a reaz eur boan vras dezhan, ha pelloc'h n'en em blijas mui var he dron. An enouamant a grogaz enha, hag an aoun oc'h en em fiziout e den. Ouspen-ze taguet oa ive gant clenvet ar vro, melavar gant ar c'hoant guelet c'hoaz ar c'harter eleac'h m'oa bet ganet. Rag-ze eul lestr o veza deut a dost d'an enezen, e savaz enha, Tala hag hen, evit distrei e Frans, hag e lezas Bertrom da c'houarn al lapinis, goude beza bet roue en enezen-ze epad deg vloas.

An tad Ulric a ioa maro eun nebeut a voa, ha Tala a varvaz ive el lestr araog digouezout gant he fried Bertele en he vro. Evelse ar messaer a zigouezaz en he garter ker paour ha ken dilezet evel ma voa pa her c'huiteas. Epad an treiz e serfiz ar pez on eus merket ama, hag abenn eur pennad goude e roaz he baper, evel ma on euz he lavaret, d'ar serfaguer ma on eus comzet anezhan er penn kenta euz an histor-ma.

Pe seurt kenteliou da denna euz ar pennadik scitma? Guelet a reomp pa vez bet diorroet mad eur buguel, pa en devez bet eun descaderez christen abers tad ha mam, er c'hatekiz, ec'h eller esperout e tale'ho mad epad he vuez da virionezou ar feiz. Doujans Doue a bellai an droug diouthan, e pe stad bennag en em gafe, daoust d'an darvoudou a ell digouezout gantha.

Guelet a reomp ive e kemer alies an den calz a boan evit digouezout en eur stad var behini ema he zell abaone pell amzer; ha goude m'en deus tizet hueloc'h avechou evit na espere erruout, e teu da enoui, da guemeret hirrez oc'h ar pez ea deus pell amzer c'hoanteat.

Guelet a reomp c'hoaz ar virionez euz ar goms-ma a gleyer ken alies : *Goaz aze d'an hini so ganet e goal vro*. An ti ma zeo bet ganet eun den enha, al lec'hiou en deus d'arempredet epad he vugaleach, a zalc'ho ato eur c'horn euz he galon epad he oll vuez. G. M.

Hanno ar Zent evit ar Sizun-ma.

- DILLUN 30 KERZU. — Sant Thomas.
- DIMEURS 31. — Sant Sylvestr, Pap.
- DIMES'HER. Kenta GUENVER. — Circoncision, pe Envod hor Zalver Jesus-Christ.
- DIZIOU 2. — Eisvet Sant Stefan.
- DIRGUENER 3. — Eisvet Sant Ian Avielor.
- DISSADORN 4. — Eisvet an Inosantel Santet.
- DISSUL 5. — Dere'hent gouel ar Rouanez.

Ar memes Abostol evel ar zul diaraoc.

RELETER.

Dissadorn diveza, an Aotrou Escopien, deus roetan urziou e cloerdi Kemper, 7 cloareg ordas, resevet ar veleguiach, 28 an asiellach, 17 an abostolach, 14 ar pevar urs bihan ha 2 curanen ar gloer.

Setu ama hanoiou ar seis beleg nevez.

- An Aotrou Dantec, euz a Vrasparts.
- An Aotrou Bernard, euz a Zouarnenez.
- An Aotrou Dirand, euz a Bont'n'Abat.
- An Aotrou Baraou, euz a Audiern.
- An Aotrou Bodenez, euz a Blouguerne.
- An Aotrou Ar Venn euz a Borspoder.
- An Aotrou Guiffand, euz a Grozon.

Beleien canton Pleyben o deus digasset er sizun-ma pemp cant lur evit eur zouave servich ar Pap.

Euz a barrez Locronan Kernevez euz digasset daou lur ha triugent evit hon Tad Santel ar Pap. Anare hantze ne ket bet savet dre eur guest. Pehini a zo deut anezhan he unan da rei ar pez a zouje. An oll o devoa c'hoant da rei eun dra bennag d'ho zad. Dont a rea an dour em daoulagad, eme Aotrou Person ar barrez-ze, o velet peorien o tigas din ar guenneg o doa izom anezhan evit caout bara, ha bugaligou pevar, pemp, c'hoac'h vloas o tigaz ive a galon vad ho guenneg hag o tioneur ar madigou o divije bet gantha.

Al listen digor e ti an Aotrou Kerangal evit hon Tad Santel ar Pap a zao brema da ugent mil eis cant eul lur, da daougent. (20,841 l.)

Christenien vad euz a barrez Sant Melan, e Montroulez, o deus roet daou vil lur evit lacat pevar zouave en arme ar Pap.

Scitfa a rer euz a Vontroulez. Pedenn da lakat e Feiz-ha-Breiz.

Eun nebeud merc'hedigou euz eur skol a Vontroulez ho deus espernet ar gwennezen roet d'ezo gan ho zud, da zul, evid kaout madigou, frouez, hag ho c'has d'an Tad Santel ar Pab, en eur c'houenn digan-t-ha-he vennoz..... 20 liour.

- An Aotrou Kerzale..... 10
- Victoria Berthou, matez..... 5
- Eur c'horist..... 25c.

Euz a Blabennec e scrifer deomp ive. Eun den yaouaneq eus a barrez Blabennec, hanvet Eosen Corre, a so diblasset, en deisioù kenta eus ar mis-ma, evit mont da Rom d'en em lacat evel zouave servich hon Tad Santel ar Pab.

Eul labourer douar eur ar memes parres, eun tad a famil a n'ep deus quet cals a leve, en deus roet cant lur d'an Tad Santel evit e sicour en e esomou.

Tri all c'hoas euz a Blabennec, Yan ar Brun, Anna

Morvan, hag Anna Keromnes, o deus roet peb a bemp ur evit arme ar Pab.

Hanoioù ar Veleien maro en Escopti Kemper epad ar bloavez 1867.

An Aotrou Glevarec, bet person.....	81 blôas.
An Aotrou Caroff.....	67 —
An Aotrou Yveu, bet person Plogoff...	79 —
An Aotrou Rouat, person an Trevous..	62 —
An Aotrou Boulic, bet person Carantec.	67 —
An Aotrou Fave, beleg Poul-ar-Bachet..	40 —
An Aotrou Kermel, person Castelnevez.	78 —
An Aotrou Mesangroas, pers. Rumengol.	77 —
An Aotrou Mear, bet person Plougonvelin.	75 —
An Aotrou Pen, bet person Dirinon....	79 —
An Aotrou Balcon, person Plouider....	57 —
An Aotrou Quiviger.....	70 —
An Aotrou Saleun, prof. e Pont-Croas..	47 —
An Aotrou Silliau, bet person Plouian..	71 —
An Aotrou Gueguen, person Locqueffret.	53 —
An Aotrou Croguennoc, pers. Plouedern.	61 —
An Aotrou Desquatreaux, pers. Ploeven	67 —
An Aotrou Dupont, person Pleyben....	53 —

Daou Gardinal a zo nevez maro, ar c'hardinal Bofondi maro e Rom d'an trede a vis kerzu, hag ar c'hardinal Sterckx, arc'hescop Malin, maro d'ar pevar a vis kerzu.

Itronezet Guenet o deus casset, eun nebeut dervezion zo, pevar facat braz a liénach da zoudardet ar Pap. Itronezet Redon a ra ar memes tra er sizun-ma, ha re all, credabl, a guemero skuer dioutho.

Er bloas 1868 e vezo eun eclips heol, e kelc'h, an trede varnugent a vis c'huevrer, da deir heur 48 minuten dioc'h an noz.

Ar c'hresc deut var an ed en dervezion tremenet, a zo chomet a za, eme *Gazeten ar Meziou*; e lec'hiennou zoken ez euz eun nebeut fallaen. 233,967 pouezellad etre greun, ha blend so deut e Frans euz ar broioù all er sizun diveza a viz here.

Ar c'hlenvet var ar chatal corn a gredet a vo eanet tre er Belgic. Deut eo adarre en dro da viana var dro ar guær a Anvers, hag ober a rer kement a eller evit miret na deui ac'hano er vro-ma.

Ervez ar c'heleier ez euz en Europ cant mil lestr marc'hadour; ar Frans e deuz evit he lod pemzec mil daou c'hant nao hag antereant.

Cazetennou Sant Brieac a gomz euz eul labourer douar euz a Argentré a zo bet lazat gant he gar eun nebeut dervezion zo. An den-ze en devoa eun ners dispar. Laket en doa claoustre e talc'hje a za he gar eur garg teil enha. Mont a ra d'ar rod, hag e lavar d'he vevel cas ar c'hezeg var arag. Ar mevel a laca ar c'hezeg da vale, ha va den, crog er rod oc'h enebi outho, a zo, en despet d'he ners, discaret ha flastret dindan ar rod car.

Setu petra erru gant meur a zen ere a fell dezho ober fougue gant ho ners. G. M.

D'AN AOTROU KERNARKER.

Aotrou ker,

Skrifet em boa eur respont d'eoc'h, hag ar respont-ze a dle ye mont beteg-enn-oc'h dre *Feiz ha Breiz*. Mes *Feiz ha Breiz*, me hen kompren, n'ed eo ket ganet evid kemmeret perz er sort disputou a zo etre-z-om, ha setu ne gredan ket he fidi re d'hen hem garga euz ar gevridi. Mes kavet em beuz digor en *Impartial* a Guemper; deom di eta da ober krogadou gourenn: enno e vezo frank d'eom d'hen hem flac'hata ha d'hen hem astenn war an dachenn.

Me a lavaro d'eoc'h ivez em beuz sonj da skrifa en *Impartial* war ar poentchou-ma:

Ar yez a zavare pe a gomze Adam hag Eva e baradoz an douar, piou hen devoa greet aneza, Doue pe on tud kenta?

O lakaat edo Doue, e pe-lec'h hen devoa kemmeret an dantez, an elvennou evid ober aneza?

An elvennou-ze, hag ho c'havout a reer bepred war an douar?

Hag ho c'havout a reer er yezou koz, el latin, e grek, en hebreeg ha re-all? Hag ho c'havout a reer er yezou a zavarer brema?

Ar brezoneg, lavaret a reer ez eo eur yez koz braz; mes, ha beza eo ker koz ha ma leverer?

Ha beza eo ker koz hag al latin hag ar grek? Ha beza eo kosoc'h pe yaouankoc'h?

Ha beza eo ker koz hag an hebreeg?

Ha kavout a reer ivez er brezoneg eunan benag euz an elvennou a bere e voa greet ar yez kenta?

Peini a vez ar gwella doare skrifa evid ar brezoneg?

Habeza e c'hallfet sevel ha kempen eun doare skrifa mad evid ar brezoneg hag hen lakaat da dremen e kustum?

Ped lezenn a vez da heulya ha petra da ober evid sevel, renka, peur-gempen an doare skrifa-ze?

Setu aze, Aotrou ker, ar poentchou em belle c'hoant da zispaka, ar goullennou em belle c'hoant da gavout respont d'ezo. Mar kerit ma zikour da doler skerijenn war-n-ezo oll, da gas ma ervenn da benn e raffot plijadar d'in.

Ho Servicher dister,

Y.-K. KERSALE, Beleg ar Zalet.

PRIZ AN ENN.

KEMPER — 21 kerzu — PONT-NABAT — 19 kerzu.

<i>Priz ar c'hant lur.</i>	
Guinis....	17 lur, 02 c.
Segal....	43 lur, 63 c.
Eiz.....	40 lur, 64 c.
Ed-du....	8 lur, 55 c.
Kerc'h....	40 lur, 22 c.
Avalou-douar	5 lur, 50 c.
<i>Priz ar c'hant lur.</i>	
Guinis....	18 lur, 43 c.
Segal....	43 lur, 34 c.
Eiz.....	44 lur, 38 c.
Ed-du....	9 lur, 69 c.
Kerc'h....	44 lur, 38 c.
Avalou-douar	5 lur, 22 c.

Ar Gerant: AR. DE KERANGAL.

Kemper, moulet gand AR. DE KERANGAL, Moulet an Escopti.

FEIZ HA BREIZ,

KELOU A BEP BRO, HA KENTELIOU VAR BEP TRA,

DIGASSET BEP SUL

Da guement Christen a goms ar brezonec.

Eun Abonnament d'ar Gazeten à goust :

Evit eur bloas.....	DAOU SGOUET.
Evit c'huec'h miz.....	EUR SGOUET.
Evit tri miz.....	C'HUEC'H REAL.
Eur gazeten ebken.....	DAOU VENNEC.

Ar baamant a dle beza great araog caout ar gazeten.

ALIOU.

Ar scrijou a ve c'hoant da lacat ar gazeten a dleer da adressi oll d'an Aotrou MORVAN, Beleg e Kemper.

Ar pacamanchoù a dleer da adressi d'an Aotrou SALAUN, ebken. An abonamant a guemerer e ti an Aotrou SALAUN, librer, ru Kereon, e Kemper.

KEMPER, 4 Guenver 1868.

Eur scrifagner christen a lavare en dez all o comz euz an dud difeiz a zo ato o clase eun abeg bennag er gatoliked, er re o deus relijion, er re a laca ho foan da hevilla lezen Doue :

An dud dizoue a lavar deomp : « C'hui etrezoc'h catoliked, etrezoc'h christenien vad var ho meno. a dije caout sonjou izel ha dister ac'hoec'h hoc'h unan. Ho lezen a c'hoar hemen kementse deoc'h, ha gouscoude ne rit netra nemet evit ar fougue, evit ar c'hloar hag an henor. Ho prezeguerien zoken pa o deus c'hoant d'ho lacat da ober eun dra bennag pe da rei eun dra bennag, a so dalc'h mad o lacat gloar hag henor da luguerni dirag ho taoulagad. »

Guir eo, ar gristenien vad a glasc gloar hag henor dre ar mad a reont. Ne glascont ket avad ar c'hloar hag an henor evel ma clase an dud difeiz. Ar re-ma ne glascont nemet meuleudi an dud; ne velont netra en tu all d'ar vuez-ma, hag evelse mar greont eur vad bennag, mar greont eun dra bennag din da veza meulet, e fell dezho e teufe dezho gloar hag henor arag ma tiskennint er bez eleac'h m'ema an termen diveza evitho.

Ar guir gristenien ne ket an dra-ze eo a glascont. Ne zontont ket er c'hloar, en henor, er veuleudi a elfe beza roet dezho var an douar. Kementse ne ket avoalc'h evitho; kementse a gavont re ver, re zister, ha var ar poent-se ez int cals diassoc'h da gontanti evit an dud dizoue; fallout a ra dezho caout eur c'hloar hag eun henor hag a bado ato; eur c'hloar hag eun henor ha ne vezo morse lamet digantho. Gloar hag henor er vuez da zont, eurusdet an Env, setu ar peza glascont; ha mar fell da Zoue e ve roet meuleudi, gloar, henor dezho er vuez-ma, e resevont kementse ep beza ho c'hlasquet. Gouzout a reont en deus lavaret ho mestr divin e roje an eurusdet eternal er vuez all, hag er vuez-ma zoken var ar marc'had, cant evit unan d'ar re o divije great, roet pe dilezet eun dra bennag evit he c'hloar.

Mar clascont eun dra bennag evit ar bed-ma, ez eo lazat gant ho bugale eur brud mad, eun hanodidagad, eun hano hag a allint da zouguen gant henor, pe mo kirit, gant fougue; eur skuer vad hag a ello hera heuillet a li-gaoc da lignez gant kement a deui var ho lez. Disparijont a reont avad kementse var gant ar c'hoar. Kementse a dle beza douaret gant he bez.

Setu eoa ar c'hoar a zo etre ar peza glasc an eun gristenien hag ar peza glasc an dud difeiz. Ar re-ma ne c'hortozont netra en tu all d'ar vuez-ma, ne glascont nemet ar peza glasc ive al loenet mud; ar guir gristenien a fell dezho caout perz en eurusdet, e gloar an Alev, en eurusdet, e gloar Doue he unan.

Ha peur liessa an eil eun hag eun a gal ar peza glasccont. An dud difeiz a varv, eun eun doare bennag, abez evel ma selle dezho. Piou a gomz anezho goude ho maro? Ha mar leverer avechou eur guer bennag divar ho lenn, ha ne deo ket evit rei mallos dezho? Eleac'h ar gristenien vad a zalc'her sonch anezho pell goude ma vezont eat ac'hann; comz a rer anezho gant meuleudi, ha kenderc'hel a rer da vennignon ho hano etonez kement o deuz ho anavezet pe clevet comz anezho.

Ervez ar c'heleier a Rom, an Tad Santel er deus hanvet (*Preconizet*) seis pe eis escop nevez an tignent a vis kerzu. Ne anavezomp ket c'hoaz hanoioù all eskob-ze. Evit doare Pii Nao ne rai ket c'hoaz a gardinnet nevez, petra bennag ma vanc ugent etouez ar gardinnet.

Eul lizer a Rom a gomz euz eun ofiser zouavet en devoe eun tam tabut eun dervez, brema ez euz nebeut amzer, oc'h eun den hag a guinnigas dezhan en em ganna. An ofiser a lavaras n'en em gantje ket, rag gouzout avoalc'h a rea eo difennet an emgannou-ze en arme ar Pap. Gouscoude lod euz he gamaradet ne blijas ket an dra-ze dezho, hag unan bennag zoken a lavaraz oa eun digalon.

An ofiser o veza clevet se a roas he ziscarg, a guiteas Rom ha pelloc'h ne voe clevet hano anezhan. Hogueu

blanad d'ar c'hoarzh ober eun duffaden en tan, guir eo, re
 vir eo, siouaz li ar pezh a lavarit. Penaoz n'em oa-me ket
 1806) et keñt oc'h er pezh am euz klevet ganoc'h? Na mui,
 na m'ar, Labouk, mar d'eo ar chigoden eun douar a
 vuez evit ar re a c'halvit Gallaoued, evit hor Bretoned
 bez' eor eun douar a varo, evel eun tan ho dey diabarz ha
 dianveaz, ho zaot er bez, hag a zismant' ho ziegesiou.

En amzer-ma, Laouk, me lavar, abaoe eun nebeud
 bloavesion, e ma ar c'hiz da rei prisiou da bep seurt tud
 hag evit peh seurt traou. Prisiou a roer d'ar penhou
 tiez, d'ar mevelloù, d'ar plac'hed, d'ar chatal, prisiou
 evit an oll dreyajou a zao en douar. Metalen aour da
 Fanch, abalamour ma'z eo eun tiek dibab, ma sav eur
 chroz a loned. Metalen arc'hant da lann, abalamour
 ma'z eo mevel en eur memez ti abaoe tregont, daou
 ugent vloaz. Eur pezh a ugent real da Bernin, abalamour
 ma'z eo kempenn brao he amann, ma'z eo braz ha livet
 kaer ant amann en he ribot. Alar, da Gou, abalamour
 ma'z eo eun vam gazek, euz ar re genta. Nizerez da
 C'hlaoda, abalamour ma'z eo euz eur vioc'h penn-baill,
 a ro muioc'h amann eget a leaz, eur c'hole a zo huel,
 gouzoug evel na veler ket, eur c'hole a zo deut var
 eun dreist ar mor, euz a Vro-Zaoz da Vreiz-Izel, en
 d'euz eun tad n'ouzou ket he hano, eur vam a zo bet
 krouet, gant Doue me var, dishevel dioc'h ar re all.
 Freuzerez da Jilez, abalamour ma'z eo euz kaol, kaol-
 irvin, panez, patatez, melchen, per, ayalon, traou braz,
 pesiou traou, traou founuz, traou a garg ar c'hinou oc'h
 ho guele. Duallerez, lann da Jozik, abalamour ma vag
 en he graou eur penn oc'h a bouez he unan evel dek,
 eur mell aneval en digz' reu, en d'euz skilloù, mez
 dispar, eur vam-viz a zo, jedan, a zo koyek, a ro bep
 bloaz moc'higou dioc'h an dousen.

Perak eta, pa glasker kement ment ha pouez e mestk
 ar chatal, pa zeller kement oc'h ar parkeier a ro mel-
 chen, geot a vern, dioc'h an druill, oc'h ar loenneier a
 ro foenn, karrad eleac'h grayazad... Perak n'en em
 droer ket pelloc'h ave oc'h an dud, ne glasker ket er
 meinez tra guellaad orin an dud, kaoud startoc'h tud,
 galloudussoc'h tud, furroc'h kristenien! Mar d'eo mad
 e ve en eur c'haou memez eur pemoc'h tailet mad,
 maget mad, lard da skuiza chouk ar fetisa kiger, perak
 ne vel ket klasket an tu da gaoud e peb ti tud fac'h, tud
 hep galna rogn, plac'hed a skiant eleac'h pennoù avelet,
 paotred a labour eleac'h, galouperien noz, goazed a urz
 eleac'h pennoù hostaliri, merc'hed a c'houarn eleac'h
 bogdorred, elag, h silou, ridellou a lez ha leaz hag
 greun da drema, na chom enho nemet ionen, meini-
 gou, hostennachou?

Pa vezo c'hoant da gaoud, da zavel tud dioc'h ar c'hiz
 a lavar, guella tra, kenta tra a vezo da ober eo bihan-
 naad, ne n'ouspad, eo difenn ar banneou chigoden, eo
 kondaoni an dud, goazed ha merc'hed, da eva nebeu-
 toc'h a chigoden, evit ma hellint debri guelloc'h bara,
 frankoc'h a vana, paea aketussoc'h mestr, mevel, plac'h,
 Gouel-Mikeal, rokenen ha bragez, kouef, mouchouer
 ha tavancher, boutou prenn ha boutou ler, evit m'ho

devezo an oll nebeutoc'h a boan benn, ma vezo nebeu-
 toc'h a zisionkerien... evit ma vezo, en eur ger, huél-
 loc'h tud, ruspioc'h tud, hag ive, — lavaromp an traou
 var eun, daoust da varo eun darn yourt hisien, — evit ma
 vezo santelloc'h tud, pe guir, gouskoudé lion euz oll peb
 a ene, ez omp oll krouet evit gounit ar baradoz... Oh!
 hag a c'hoarzerien a velan-me ama euz a gichen an tan
 a rotomder d'am izil! N'euz forz... Lan An Dall n'en
 d'euz ket aon rak he skeud, ne fell ket dezan ober daou
 dam euz ar viriopez.

Ia, ar chigoden a zo evit hor bro eun douar a varo. Ia,
 mar kendalc'homp da eva, da lonka chigoden, ha ni
 bretoned, ha ni eun orin dud ker koulz diazezet var an
 douar, ni ia var zismant, ni ia da stomogou paour, ni
 ia da choukou striz, ni ia da dufenien ludi, ni ia da veza
 lazet gant ar paz, gant ar berr-alan! O va Doue, guele
 eur breton en deuz dija berr-alan, poan o kaoud he vuez,
 da dregont vloaz, da bemp bloaz ha tregont! An Dero
 a rea bou tud koz a dro eta en alek a zeiz da zeiz! Ha
 penaoz ne rafe ket? Nag a yugale, en lion amzel, abarz
 ma vez deut evitho an heur da c'henel, a zo dija great
 dioc'h ar chigoden! Abaoe ma zeuz anezo, e maint
 beuzet e kreiz ar chigoden! An tad a zo mestr! Ar
 vam a zo liperez, roullerez! An tad a vez mezo bep sizun,
 diou, teir gueach ar sizun! Ar vam ne vel ket anter he
 hent en distro euz ar gousperou, euz ar mare vad! Ar
 vam a dro e chigoden ha leaz hag amann ar zaot! Ar
 c'hreg, a unan gant ar portez, gant ar c'houarnerezed,
 a eskemm, oc'h boutailloù melen an eiz, ar c'herzh, ar
 guiniz, ar bleud, ar c'hig a zo en lie c'heal! An d'ac'h,
 evit paea n'ouspad ar skoden en hostalirioù, aitez eno
 kement en d'euz touchet, evit he vareñ bras, evit he
 gazek, he ebeulez, evit he zaou gole, evit he peder
 poezellad greun! Dre-ze e teu dienez, e saoumizer en
 ti, eo guisket fall ar yugale, eo maget paour ar yugale,
 e ranker iun, pe dost, n'ouspad an d'erev er holl kolter
 peb nerz, ez a peb iec'h et var he c'hiz, e reur simpl,
 tochorik, e varver araok ar mareñ. Evelso guelit,
 evesait pe seurt tud a zo brema en hostalirioù...
 guelit nag a dud krommet abred, fortev da vout vloaz,
 eat ho c'hoi en ho c'heim, ho lenn en ho gouzoug, ho
 gouzoug en ho diou skoaz... tud, goazed, paotred
 iaouank, a ziskenn muioc'h en douar eget ma zavont
 varzu an env... merc'hed a drivac'h, ugent vloaz n'ho
 d'euz dija liou ebet, pe da hirra a zo varsochou ar
 c'hrampeuz, a zo douaret oll, stenet oll, anter varo!...
 Paotred iaouank a vezo bremañ eur zamm pouner
 evitho ar fuzuil hag ar zac'h ledé a rankint da zoug
 var ho c'heim pa vezint e renk ar zoudardet! Plac'hed
 iaouank a zo hevel, oc'h grac'hed koz, abenn ma vez
 deut dezo an oad da zimiz!... Goazed, merc'hed a rank
 deut dezo an oad da zimiz!... Goazed, merc'hed a rank
 béva gant souben divar kig fresk, gant souben divar
 kig iar, gant souben an druzaik, gant soubennou guenn,
 ne ouzon gant petra, gant eul louzou nevez, a stanka
 bep deiz, gant ar pezh a c'halver eol moru!... Bretoned,
 goazed Breiz, ezac'h Breiz o veva gant eol moru, gant
 soubennik iar pe gilloc'h! Ah! tud koz, bretoned euz an

amzer guechall, eur veach c'hoaz na zistroit ket en hon
 touez, rak kollet e veac'h en ho pro, ne gaffac'h mui en
 ho pro nag ho ment, nag ho nerz, nag ho liou, nag ho
 korfou!... Ma kaffac'h da vilada troeñ enedou! Mez e
 korfou ker klanv penaoz kaoud eheor laer? E korfou
 diskaret, pzel gant ar vesventi, penaoz kaoud epeou
 digatar, epeou santel!
 O va Breiz, ar vesventi eo a doull benned da vez! Ma
 na zeuz furroc'h hep dale, ma na evez nebeutoc'h ma
 na dorrez he fenn oc'h boutail ar chigoden, prest e ma
 great da dro var an douar, ne d'oud mui nemet eur vro
 disprizet: ar vretoned, da vugale, n'int mui nemet eur
 hopl dizeriet!
 LAN AN DALL.

Europa novez e Kastel Rambouillet. (1)

Er bloaz 1805 ann Impalaer Napoleon kenta, en em
 gayer e kastel Rambouillet gant he vinistred hag ar
 pennoù braz euz he lez. E pad ann deiz, pa na iea ket
 da chassel e labourer gant he vinistred. D'ann noz, e
 leac'h muzic ha comedioù pe tragedioù Paris, e vije
 c'hoarjou eun eur zal vraz euz ar c'hastel. Er zal vraz-ze
 e vije leket nao daol, pedeir a bep tu, hag unan e kreiz
 euz ann Impalaer, mar teufe enn he sonj da c'hoari
 ar reur jeu bennak. War hep taol e vije ellumet pemp pe
 a c'hwag, h goulaouen koar.
 I m'ac'hanta eun novez ann Impalaer a azezas ouz
 he eun d'ac'h a oa reket war eun ann holl bienveur evid
 da c'hoari laerie, e gallec, jeu d'échecs. Guelomp a lavar
 d'ann Aotrou Duroc, unan euz he general, ha gouzout
 euz ar rit ha ar c'hoari laerie? N'ouzonn ket, Sir. Goulennit
 euz dieta digant ann Aotrounez all aze ha na garfe ket unan
 bennag anezho dont da ober eur c'hrok ouzin er c'hoari
 laerie? Ann Aotrou Duroc a c'houlenn drema drehont
 mar boe unan bennag hag a ouie ar c'hoari laerie. Eunn
 toullad e oant epo ha na oa nikan a ghement a anaveze
 gant c'hoari-ze diez da ziski. Mes, Mear Rambouillet ha
 Mear Mear ket aze, a c'houlennaz neuze ann Impalaer. Eo,
 Mear Sir, ma amann. Pedit hen da zont da gomz ouzin. Ann
 Aotrou Duroc a icaz da gavout ar Mear hag a lavaraz
 dezhan. Ann Impalaer so o c'houlenn ac'hanoeñ. Dont
 a reaz dioc'h tu d'he gavout. Aotrou Mear, eme Napo-
 leon, ha n'euz ket enn ho kear, etouez ar re so dindan
 an d'ac'h unan bennag hag oufe c'hoari laerie? Eo, Sir,
 personn hon iliz pares a anavez ar jeu-ze; mes, Sir,
 n'hellann ket assuri d'heoc'h e ve euz c'hoarier euz ar
 re wella. N'euz forz, eur c'hoarier hepken a glaskann.
 Mes, hag eunn den jantil eo, eur galonn vad a zen? Sir,
 eunn den eo euz ann dibab istimet ha karet gant he
 holl paressianiz. Me fell d'in he welout, eme Napoleon.
 Ann Aotrou Duroc a icaz eta d'her c'hask.

Eur c'hardeur gonde e wleur o tont er zal eunn den
 koz, bleo guenn var he benn, hag eunn ear joauz ha
 laouen var he visach. Kasset eo dirag ann Impalaer. Hema
 her saludaz gant madelez hag a lavaraz dezhan komziou

(1) Rambouillet a zo eur ghear vihan seiz leo dioc'h Paris.

deread-hervez he oad hag he stad a velek. Aotrou
 personn, eme Napoleon, klevet am euz lavaroc'h oc'h
 eur mestr er c'hoari laerie. C'hoant am euz eta da ober
 eun essa ganoc'h ha da velout pehlioc'h bannoc'h
 vezo trec'h d'egarte. Guelomp a vezit dezhan he
 d'in ha n'ho pet ket aoun, n'ani esperant ket, ma gant
 eunn taol lall bennag.

Allaz, Sir, eme ar personn, ia guechall ec'houlenn
 c'hoari ker koulz hag eunn all, mes bremañ n'ouzonn ket
 hoaz mui dioc'h kementse. Pa na reur ket a lies, eur
 vicher, ne ve ket kement a ijin d'heoc'h ober. Oh!
 Aotrou personn, c'hoari laerie, neket eur vicher,
 eur skiant eo. Mes, he vern kella Petra bennak
 ma livirit n'oc'h ket mui ken ijinuz, ehoi a ro d'in
 d'anavezout n'ho c'h'euz ket c'hoaz, a skouet ho
 victoariou tremenet. Guelomp preu ac'hanoeñ a gou-
 manso. Ann Aotrou personn, o veza azezet e rag ann
 Impalaer, hema a deñnaz euz ho c'hodell pehoar, a
 ugent lur, hag a daolaz unan anezho varann daol eun
 eur lavarout. Henedz a fell ket beza pe goude he bollet.
 Na deomp ket ama c'hoari evid ar blijadur hepken. Ar
 personn euz he du, a deñnaz euz he c'hodell eun talc'hik
 vihan nebeud a dra' enñez. Pa velaz pezo aoun ann
 Impalaer, e ligoraz daoulagad braz hag e lavaraz. Sir,
 eur zomm vraz eo kementse, re eougent lur bep taol.
 Ar personn na'z na c'hoarier ma ijin d'ac'h. Napoleon
 evid hen lenn a boan, a lavaraz dezhan gant eur vuez
 a ziskoueze he galonn vad. Aotrou personn, dioc'h
 arc'hant-hu a zo tra ar paour, hec'h fell ket d'in e
 teulec'h ama da gont' he tra euz ar vez hec'h euz. Ep em
 likit var hanter gant ann Aotrou Duroc, so aze, ha pep
 him a takad he lod, c'hoi ho spered, hag han, he
 arc'hant. Mes, eme ar belec'h, ann Aotrou Duroc ne ra
 ket marteze kement a stad euz va skiant evel ma ijin tu.
 Sir, Ann Aotrou Duroc, o kaoud ann ennoñ da veza ganoc'h
 er brezelioù hag eun holl danjerioù, a er vad penaoz
 hoc'h enebourien n'int morsell evid ho trec'h. Ar
 meuldroù-ze kavet a zo ar baroet gant eunn ear a
 vadelez a reaz mui a blijadur d'ann Impalaer eget holl
 prezeg eunou ann Aotrou Pontant! Aotrou personn,
 Duroc ha me a zo bremañ ho parossianiz, na fellit ket
 dreist penñ ann eul hag egnite ac'hanoeñ.

Commanz a ra ar c'hoari. Seta ar c'hrok, etre ann
 Impalaer-ze ker gallouduz hag eur belec'h. Souezuz oa
 guelout ar c'hapitenn braz-ze, ker euz a d'hoan hag a
 enor euz eunn daol vihan kichen a kichen gant eur
 belec'h n'anavezet ket. Gant eur gomz ant-hin a helle
 kass pemp kant mil den euz a eur penñ ar penñ ann
 Europ, a oa guelout neuze o sonjal a zevri da hec'h fival
 eur marc'hek askorn bilian gant eun man teufe d'hen
 tostaat re d'he enebour, na vije bet paketa. Hag er
 gombat nevez-se n'en doa koulz koudé o stourmi outhan
 nemed eur belec'h koz.

Ma, trec'h et kaer eo ann Impalaer gant ann belec'h.
 Hema a c'hounez pemp parti dibelc'h tuoc'h a se, gant
 kement a ijin, a chans vad ne ba ket Napoleon evit
 kemer alan. Pa oa deut ar moment d'en om gitaat,

Aotrou Yzopt alier e lezvarn Roazon, hag evit he zicour an Aotronez Belle ha Claret barnerien e lezvarn Kemper, Setu ama hanoioù ar Jurect.

An Aotronez :

- Gustav-Victor-August Mauduit, euz a Bont'n-Abat.
- Lucien Pilven, euz a Visseny.
- Lois Mege, euz a Sant-Martin.
- Guillou Picard, euz a Lennon.
- Constant Lejeune, euz a Vrest.
- Charles-Bonavantur-Mari Dabreil de Rays, euz a Van-nalec.
- Ian-Fransez Cann, euz a Logonna.
- Charles Vaucel, euz a Vrest.
- Per Dandurand, euz a Vriec.
- Fransez Bastit, euz a Vrest.
- Amedee Delecluz-Trevoedal, euz a Odiern.
- Hippolit Violeau, euz a Vontroùlez.
- Charles-Fransez-Mari Lamarque, euz a Vrest.
- Lois-Eujen-Mari Lesne, euz a Bont-Croas.
- Nicolas Moal, euz a Enez-Vaz.
- Herve Kerouanton, euz ar Vourc'h-Venn.
- Lois-Mari Moreau, euz a Vrest.
- Charles Philip Watebled, euz a Vohars.
- Per Cloarec, euz an Dre-Neyez.
- Erzen-Mari ar Menn, euz ar Faou.
- Clauda-Mari Balc'h, euz a Votsorhel.
- Per-Lois Postolec, euz a Blouguer.
- Charles Allain, euz a Guerhaes.
- Ernest Bazil, euz a Lesneven.
- Stefan Treguer, euz a Blouviau.
- Theophil Madec, euz a Odiern.
- Donatran Pivain, euz a Landivisiau.
- Amedee de Vincelles, euz a Lanarvily.
- Felix Moysan, euz a Bont'n Abat.
- Alan Caroff, euz a Vrest.
- Anton Cail, euz a Blouzevede.
- Aymar de Blois, euz a Ergue-Armel.
- Anton Rabot, euz a Zouarnenez.
- Emil Marinier, euz a Bont-Croas.
- Mikeal ar Bourg, euz a Sizun.
- Charles-Fidel de Kerret, euz a Bleyben.

Evit dere'hel leac'h d'ar re a vancfe :

An Aotronez Ian-Fransez Beauviel, Theophil Fougeray, Paul-Lois-Casimir Dore, Alexandr-Thomas Fessy, ho fevar euz a Guemper.

Ar veleien hag eur c'hristen mad bennag euz a ganton Brieç, o deus savet c'huec'h cant antercant lur evit lacat zouavet en arme ar Pap. (650 fr. 12 c.)

Euz a Blougastel-Daoulaz e scrifer deomp :

Sœurezet an trede urz a barrez Plougastel-Daoulaz hag hiniennou divar ar meas, o deus savet pemzeg lur ha pevar ugent da gas d'hon Tad Santel ar Pap. A. H.

Euz a Eussa e scrifer ive :

Epad an tri dervez pedennou zo bet great evit ar Pap,

tud euz Eussa o deus savet 77 lur 40 c. evit hon Tad Santel.

An Aotrou person en deus roet..... 50 l. « c.
 An daou vikel 25 lur pephini..... 50 l. « c.
 Etrezho oll..... 1771 40 c.

Al listen digor e ti an Aotrou de Kerangal evit hon Tad Santel ar Pap a zao brema da eur mil varnungent c'huec'h cant seiteg lur ha tri ugent. (21,677 lur.)

Eun den euz a Locronan-Leon en deus roet pemp cant lur evit lacat eur zouav e servich ar Pap.

Eun den iaouanc, hanvet an Hir, euz a Guemper, so eat da Rom er sizun drement evit en em lacat en arme hon Tad Santel.

An ed a izela he briz, eme *Cazeten ar Meziou*. Ar pezh zo penn abeg a guementse ne deo ket epken an ed so deut ama euz ar broioù all, mes c'hoaz ar re so esper a deufe. Gouscoude ne gredomp ket e ve al lod ed-ze iviziken dazigas euz a vro all ebet. Mes ar re so o prena a glasc rei da gridi e tenio c'hoaz aleiz evit lacat ar verzerien da rei guelloc'h marc'had. — Al loened a ia mad varnezho.

E Sizun emae o sevel eur *c'honours* evit rei bep bloas prizioù d'al loenet lard. Evit kementse e kemeront skuer dioc'h an hini so savet eun nebeut zo e Kerhaes, hag a zaver ive en Departamanchou all.

E lec'hiennou ez eus bet er sizun drement barrou avel scrijus. En Auvergn ne elle na car na carros mont en hent. Tost da Vaion eun trein o vont gant an hent houarn so bet discaret lod euz he wagonioù gant an avel.

Epad an unneg mis kenta euz ar bloas 1867 ez eus digasset e Frans, dre Varseil, 15,022 ejen ; 24,111 a deue euz an Itali ha 26,911 euz an Aljeri. Deut ez euz ive 271,523 penn danvad, couls lavaret oll euz an Aljeri. G. M.

N. B. — An Aotrou Salann a bed ar re a dle eun dra bennag evit ar gazetenn, da zigas dezhan kenta ma c'hel-lint ar pezh a dleont.

PRIZ AN ED.

KEMPER. — 28 kerzu.		PONT-N'ABAT. — 26 kerzu.	
Priz ar c'hant lur.		Priz ar c'hant lur.	
Guinis....	46 lur, 85 c.	Guinis....	48 lur, 34 c.
Segal....	43 lur, 79 c.	Segal....	43 lur, 25 c.
Eiz.....	40 lur, 64 c.	Eiz.....	44 lur, 38 c.
Ed-du....	8 lur, 52 c.	Ed-du....	9 lur, 48 c.
Kerc'h....	40 lur, 58 c.	Kerc'h....	44 lur, 50 c.
Avalou-douar	5 lur, 50 c.	Avalou-douar	5 lur, 43 c.

Ar Gerant : AR. DE KERANGAL.

Kemper, moulet gand AR. DE KERANGAL, Moullier an Escopti.

FEIZ HA BREIZ.

KELOU A BEP BRO, HA KENTELIOU VAR BEP TRA

DIGASSET BEP SUL

Da guement Christen a goms ar brezouneç.

la ant d'ar Gazeten à goust :

Ev.....	DAOU SCOUET.
Evi.....	EUR SCOUET.
Evit.....	C'HUEC'H REAL.
Eur gazetenn ebken.....	DAOU VERNEC.

Ar baemant a dle beza great araog caout ar gazetenn.

ALIOU.

Ar scrijou a ve c'hoant da lacat er gazetenn a dleer da adressi oll d'an Aotrou Monvan, Beleg Kemper, ebken. An abonamant a guemerec e ti an Aotrou Salann, librer, ru Kereon, e Kemper.

KEMPER, 11 Guenver 1868.

Etouez lavarioù ar re goz e cavomp ar re-ma : *Biscoas ki ne glascas cregui en iliz ep coeza en arrach ; ha, Moise ki clan ne vef pell.* Al lavarioù-ze euz hon tud coz a so peur liessa leun a furnez, ha dindan eur skeuden e tescont deomp ato eur virionez bennag.

Hag evit gvir enebourien an iliz a ell beza a dra zur lakete kem gant ar chas, rag n'o deus great morse ha ne reont ato nemet harzal, iudal, counnari hag arraji a enep an iliz-ze a-jom ato stard en he za, en despet dezho. Pa velont ne ellont ket he discar, ne allont ket zoken sancla ho skillfoù enhi, e clanvont gant ho c'hounnar, hag ar maro a deu ep dale da lacat eun termen d'ho c'hlenvet. Evelse eo bet azaleg ar penn kenta hag e vezo beteg an dervez diveza.

Peleac'h emae hirio ar re o deus great ar brezel d'an ilis santel en amzerioù tremenet ? Maro int oll. Ho buez evit an darnvuia a zo bet ber ; ar maro e deuz ho zammet ha calz anezho divar greiz ho nerz hag ho iec'het, calz anezho, dre glenvejou euzus, dre glenvejou ker scrijus ma spontent an oll ha ma voant contragn ho unan, pe guen difeiz bennag ma voant, pe guer caledet bennag ma voa ho c'halon, da anzao e voa dorn Doue eo a boueze varnezho. Setu penauz eo tremenet an tirantet o deus scuillet goad ar verzerien, a zo falvezet dezho beuzi an iliz en he goad.

Setu penauz eo tremenet an heretiked o deus clasket regui he zae, da lavaret eo, zo falvezet dezho he dispen hag he discar a damou. Setu penauz eo tremenet ar re o deus clasket toulla dindanhi evit he lacat evelse da goeza en he foul. Ar vengleus toulet gantho so coezet varnezho ho unan hag int bet flastret. Hag an ilis so chomet ato sounn en he za, ato o cas sclerijen eleac'h ma ren an denvalijen, ato digor he divrec'h ganthi evit receo en he c'here'h en ar re a gar distrei onthi.

— Petra ra hirio ar c'halvez, a c'houlenne eur vech eur païen digant eur c'hristen ?

— Eun arched, a respontaz hema. An dra-ma a voa en amzer ma reatar brezel d'an iliz ha c'ar relijion ; hag an oll a voar e c'halvez ar balanet hor Zalver Jesus-Christ ar c'halvez pe mad ar c'halvez, abalamour ma her c'hredent mad da Zant Joseph. Hoguen er mare ma roe ar Christen ar respont se da eur païen, ar maro a soe an iliz a reo heuzet a brezel d'an ilis santel.

Abaoe ar memes tra a zigouez dale h mad. Epad ma sao enebourien an ilis sounn ho penn, epad ma strac'hont ho daouarn, epad ma credont int deut abenn da zistruja relijion Jesus-Christ hag he ilis, ar c'halvez a ra eun arched, hag abenn eun nebeut dervezhoù e clevet lavaret eo lakete enha ar re a zoue dezho ez eant da veza mistri d'ar bed oll, hag ez eant da ziscar Doue he unan divar he drou.

Ar pezh a zo digouezet bete vrema a dle beza desket skiant d'ar re a fell dezho en em zavel a enop ilis Doue ; hoguen c'hoarvoud a ra ato gant an dud dileiz ar pezh a lavar ar scritur, o deus daoulagad ha ne velont ket discouarn ha ne glevont ket ; hag e guirionez penauz eo h alle an hini n'en deus ket a feiz guellet scler e creiz an denvalijen ma zeo en em daolet enhi ? Penauz eo balfe hen compren nefra en oberon Doue ?

Ervez ar c'heleier a Rom, ez euz e ronk zouavet ar Pap, tud euz a guement bro so en bad. Bez ez euz eno tud euz a guement carter so en Europ nemet euz ar Russi, hag eme an hini a seuf kement-ma, gounn on euz evit ar Russi abalamour da guementse, abalamour e ma ket he hano etouez ar re a zicour ilis Jesus-Christ. An Asi, an Afric, an Americ, an Enezi, an broioù-ho var dro d'ar mor braz, o deuz oll digasset unan bennag da zifen Vikel Jesus-Christ.

Guelet a rer tud a bep seurtliou, a bep seurt goem ; ar pezh a ziskuez ez eo e guirionez an ilis *catolic*, da lavaret eo ez eo skignet e peb bro, hag e deus bugale e kement carter so er bed.

a anavez meur a hini hag o deus bet ho stal aze.
Eflam, evel a velit, lenner, a rea evel calz a re all
pere, pa o deus clevet eur brezeguen, a zo prest da la-
varet ez eus bet scoet var Ber, var Baol, var Jakez,
mes ne zonzont nemeur e ve bet scoet varnezhho ho
unan.

— Lavaret a ellez, eme Fiacr, o deus bet an oll ho
stal, rag piou ne lavar ket a c'heier?

— Piou? evidonme ne lavaran ket a c'heier. Me
lavar ato ar virionez.

— Te lavar ato ar pez a zonzez? ar pez a zantez aze e
gouelet da goustians?

— Petra? te ac'h eus c'hoant d'am zremen evit eur
gaouiad?

— N'em eus ket; ne gredan ket avad e lavarlez ato
ar virionez.

Ama e savaz eun tam tabud etre an daou vignou.
Abarz ar fin Fiacr a lavaras da Eflam:

— Me a laca claoustre ouzit cant scoet ne liviri ket
ar virionez eun ha didroel epad eur sizunvez, nan zoken
epad eun dervez hed ha hed; ha mar levezet, araog eis
dez ama e pezo collet heritach da eontr ha da voereb, e
vezo torret da zimizi, (rag Eflam a ioa var ar mare da
zimizi da eur plac'h iouang euz he anaoudeguez), hag
e vezi destumet evel eun den collet he benn gantha.

Ar c'hlaoustre a voue laket, ha pehini en em dennas
d'he di.

Pa zigonezaz Eflam en he di, e voa eat an dud da
gouket, hgz ez eas d'he gambr ep comz oc'h den.
Hoguen ne gouscas nemeur en nos-ze; ne rea nemet
sonjal en he glaoustre, ha pazavaz antronoz en devoa
eun tamig poan benn. Pa ziskennaz er zal, edo he eontr
hag he voereb var zao.

— De mad dit Eflam, eme an eontr.

— De mad deoc'h, va eontr; de mad deoc'h, va
moereb. Penauz a rit?

— Iac'h evel eur pesk. Ha te?

Eflam a iea da respont; me zo ive. Hoguen he
glaoustre a deuaz en he zoneh, hag e lavaras:

— Me... me... am euz eun tamig poan benn.

— Poan benn, eme an eontr, d'as c'hoad? Mad, ar
iaouankizou hirio ne dalont netra. D'an oad-ze me ne
vouten ket petra oa caout poan benn. Hag hirio c'hoas
zoken, ne ket min eur c'hlemucher eo a zo varnbon.
Sell ouzin, Eflam, ha n'em eus ket an ear euz a eun
den iac'h hag a zoare?

Eflam a iea da lavaret: eun ear oc'h euz euz ar re
vella, ia, mes, hag ar virionez? Hag ar c'hlaoustre?
Respont a reas-ta en eur zaosmegat:

— Hoc'h ear a gavan evelse.

— Evelse? Petra? ne blij ket va min dit?

— Nan, ne blij ket avoalc'h.

— Petra ac'h eus da lavaret-ta neuze eus va min?

— Re lard oc'h; re rond ho tivoc'h; re ver ho
couzoug....

— Hag emañ e danjer da gaout eun taol goad, ha
ne ket-ta?

— Ia, va eontr.

— Ha me, eme ar voereb, petra levezet ac'hanon?

— C'hui a gavan er memes tra.

An eontr a ioa eat droug enha he veac'h, hag ar voe-
reb n'oa ket calz nehentoc'h.

— Da lavaret eo, eme an eontr, evel badus mall d'hor
gouelet o vervel?

— N'em eus ket al lod mall-ze.

— N'eo'h eus ket al lod mall-ze? Ne ouzoh ket Ope-
naus. Gouscoude e rafe plijadur dit caout hon heritach?

— Ia, va eontr.

Ama Eflam en doa lavaret avoalc'h. An eontr a heje
var he gador, hag a ioa eat persdu gant an droug a ioa
enha. Ar voereb, eun tamig dousoc'h, a lavaras d'he
niz:

— Petra eo dit lavaret traou evelse deomp?

— Goulen a rit traou ouzin, hag e respontas deoc'h
eun ar virionez, ar pez a zonzan.

Ar voereb en em lakeas da vouela, hag a lavaras:

— Eflam, goulen pardon digant da eontr, ha diskuez
dehan ne deo nemet badinerez ar pez ac'h eus lavaret,
rag sur n'eo'h eus ket comzet a zevri.

— Ar virionez am eus lavaret, eme an den iouang,
ha ne ellan ket en em zislavaret.

— Kea alesse, eme an eontr, loen fall ma zopt, ha
na laca mui da dreit en ti-ma. Piou bennag en devez
hon danvez-ni, evidot-te n'e pezo ket anezho.

Ar voereb a lavaras ne dlie ket da vianb moullenn
ep beza debret enn tam bennag, rag Eflam a ioa ribas
var iun. Hoguen an eontr a donas ne zebija mui heuz
eur c'hinaouat vara en he di; hag an den iouang,
an daelou en he zaoulagad, en em dennas kuit.

Neuze ar voereb, dre an druez e devoa oc'h he
keaz, en em lakeaz ive da vouela ha da lavaret e rafe
a dra sur Eflam beza troet he sperec, rag ar viz
divije ket comzet evel m'eo da gneat, hem pelhinario
bet bete neuze eun den iouang fur seuzus, Jeanne
pet exitho, eur potr a galon vad, en doa diskuzet ato
ho c'haret muioc'h evit ma vije bet map dezhoc'h. O bet
sur eo he benn gantha, emez he kamant labour en
deus da ober en ti-ma, ma zeo ep mar daut he sperec
da drei.

Hoguen an eontr he zilaoug ket a draou evelse:

« Eflam, emezhan, ne deoc'h ditoc'h hirio evit kent,
ne ket troet muioc'h he sperec evit na deo da hini na va
hini-me. Eun den iouang eo da vianb eur galon-griz
a garfe gouelet o vervel, ar redo deuz he zavet, evit gal-
lout caout ho danvez. Mes an danvez-ze, hen lavaret
ran c'hoaz eur vech, ne ket dezhan e vezint »

Evel a velit, lenner, ne dea ket fall an traou gant
Eflam o lavaret freaz ar virionez. Ne voa ket bet eun
heur evit coll heritach he eontr hag he voereb, ha
Fiacr, mar en doa clevet, a dlie beza louget enha, rag
esperans vad a elle da gaout da c'hounit he glaoustre.

(Eur pennad-all eur vech-all) G. M.

Ar mestr cloc'her e Moscou.

Ep ad meur a gant vloaz eo bet ar c'hiz, e Moscou,
kear be ar rousi, guchall pa edo an Impalaer o chom-
enhi, d'ar mestr cloc'her da vont d'ou vech er bloas
d'allev evit discleria peur oc'hanse ar c'heier amzer,
da lavaret eo peur ez ea an deis da asten ha peurez
ea da verraat.

D'an daouzeg a vis kerzu, (an dervez-ze en em gaf
d'erehent Nedelek e leac'h all, rag ar russionet ne gont-
ont ket evel dompni,) d'an daouzeg a vis kerzu eta, ar
mestr cloc'her euz ar Gatedral, guisket en he gaera, a
iea da lez an Impalaer eleac'h ma veze diguemeret evel
eun prins. D'he heul ez ea eur soner cleier, gantha din-
dan he gazel eur rodig cleierigou bihan stag outhi tro var
dro. Diguemeret e vezent gant an Impalaer hag oll dud
he lez en eur gambr vraz. Eno ar mestr cloc'her a zis-
cleria a vouez huel ez ea a neuze an deis da asten hag an-
nos da verraat; hag ar soner cleier a rea eun abaden
brinballerez gant he gleierigou.

Evit eur c'helou kel laouen an Impalaer a lakea rei
d'ar mestr cloc'her eur viscamant nevez hag eur zom
arc'hant; ha kerkent ha ma vezent deut er meaz euz
ar palez, ar soner cleier a lakea he rod-cleier da vont en
dro hag oll gleier Moscou a gomause da vouela. Goude
m'eo devezet soner ho goalc'h, oll sonerien kear en em
zestume en t'ro d'ar mestr cloc'her evit he zicotr da
deuzi an arc'hant en doa bet, evit eta da tec'het an Im-
palaer, hag evit diskuez ho levezet o velet ar sclerijen
evit da dreit var an denvalijen.

D'an daouzeg a viz even, (pevar varnuguent e leac'h
all, ar mestr cloc'her a iea adarre d'al lez. Hoguen en
dro-ma ar c'helou a zigasse ne voa ket kel laouen. En
dro-ma ive penn ar mestr cloc'her ne voa ket ker sounn
naghe vouez ker crec'h. En eun velt er jardin eo e
veze diguemeret, hag eno e couls lavaret en eur
gnera eut sclerije ez euz vizikeman deis da verraat hag an-
nos da asten an denvalijen da c'hounit var ar sclerijen,
an donder da vont kuit hag ar ienien da zont gant he
rod, he euz he scorn.

Petra bennig ma roe ar mestr cloc'her ar c'helou-ze
gant eur vitez treuz, e veze erouget enha ha laket er
prizon epad peder heur varnuguent. He zestum a reat
evit na vije gneat droug ebet dezhan, rag epad ar peder
heur varnuguent-se an oll o deya guir d'he vazata abala-
mour ma en devoa casset eun c'helou trist d'an Impalaer.
Ep ad an dervez-ze oll dud Moscou en em lakea e canv,
hag ar c'hiz oa da vont da brena dillad teo ha tom abenn
ar goanz.

Setu penauz e tremen pep tra var an douar. Goude
an hany e teu ar goan, goude eur c'helou mad e teu eur
goal guelou, goude laouenidiguez e teu tristidiguez.
Mestr cloc'her Moscou, guisket caer ar vech kenta a
veze guisket e griz an eil gueth. Ar soner cleier a veze
gantha he rod, mes ne veze cloc'h ebet outhi, ha cleier
kear ne veze trouz ebet gantho. Ar zonerien eleac'h ober
fest, a veze tenval ho fenn en dervez-ze, hag an Impalaer

he unan gant tud he balez a receive eur gneat
dezhoc'h deus pep tra he dermen er bed-ma.

Hano ar Zant evit ar Sann-ma

- DILLON 13. GUENVER. — Eisvet ar Rouanez.
- DIMERS 14. — Sant Miller, escop ha doctor euz an Iliz.
- DIMERC'HER 15. — Sant Paul, kenta hermit.
- DIZIQU 16. — Sant Marcel, pap ha merzer.
- DIRGUENER 17. — Sant Anton, abac.
- DISSADORN 18. — Cador Sant Per e Rom.
- DISSUL 19. — Eil sul goude ar Rouanez. An Hano Santel a Jesus.

An Abostol hirio:
Per, leun euz ar Sperec-Santel a lavaras: Prinet ar
bopl, ha c'hui kenta pennou Israel, silaouit: Peo gult
e c'houlenn penauz on eus great vad d'an den nac'ha
niet-ze, ha penauz on euz he great pare, e sclerijomp
deoc'h oll ha da oll bopl Israel eo en hano Jesus-Christ
a Nazareth, bet crucifet ganoc'h, ha savet gant Doue
leun a vuez a douez ar re varo, emañ an den-ze brema
pare evel ma her guelit d'aroc'h.
Jesus eo ar mean tolet kuit ganoc'h-hu penn-miche-
rourien ha deut da veza ar c'henta mean corn. Evelse
n'eus silvidiguez dre hini all nemet dreizhan; rag he
deus dindan an euz hano all ebet roet d'an dud evit ma
c'hellent beza salvet dreizhan.

Acton an Ebestel IV. 8.

An Aotrou Morvan, person Lanhouarne, so hanvet
person Serignac.
An Aotrou Leon, beleg an dieut hopyarn, so hanvet
person Lanhouarne.

An Aotrou Baraou, nevez beleget, so hanvet vikel e
Crozon.

An Aotrou Dantec, nevez beleget, so hanvet vikel e
Beuzec.

An Aotrou Ar Venn, nevez beleget, so hanvet vikel
e Sant-Thurien.

An Aotrou Guiffant, nevez beleget, so hanvet vikel
e Plouvoron.

An Aotrou Bodenez, nevez beleget, so hanvet vikel
e Lanrivoare.

Scrila rer deomp euz a Blabennec.

Pemp lur all a so bet roet evit arme ar Pap gant
Fanch Ar Gall, euz a Blabennec.

Al listen digor e ti an Aotrou de herangal evit hon
Tad Santel ar Pap a zao brema da eur mil varnuguent
c'huoc'h cant daou lur ha pevar ugent. (21, 682:1.)

Brema e tle beza hanvet pemp Depute evit departa-
mant Fimister. Arrondissamant Kemper hag arrondissa-
mant Kemperle a hianvo unan etrezho ho daou; arron-

dissamant Brest a dle henvel daou ; arrondissement Castellin, unan, hag arrondissement Montroulez, eun all.

Ervez gazetennou Sant-Briec, ar pezh so savet en Escopti-ze evit izomou ar Pap, hag evit lacat soudardet en he arme, a zao da eis mil ha daouguent seis cant tri lur varnugent. (48, 723 l.)

E Sant-Briec ez eus great da Nedelec daou abostoler, unneg avieler, pevar beleg ha tregont.

Hor pidi a rer da lacat er gazeten vrezoneg ar pezh zo ama varlerc'h :

Enn Escopti Sant-Briec a zo maro 36 beleg ha tud a iliz, etre an 22 a viz du 1866 hag ar 26 a viz du 1867. Cetu ama hano ar re so anavezet enn hon bro :

An Aotronez :

Julian Keromen, euz a Blougonver, oaget a bemp bloaz war-n-ughent, ha na oa c'hoaz nemet fonsuret.

Rolland Ar Gallou, bet person e Plounerin ha cure e Maël-Pistien, oaget a 65 vloaz.

Ervoan Ar Bourdonnee, bet person e Quemperven, oaget a 73 vloaz.

J.-R. Huërou, person e Loguivy-Lannion, oaget a 75 vloaz.

P.-M. Denes, person-canton e Plouaret, oaget a 67 vloaz.

F. Ar Biban, person-canton e Mur, oaget a 70 vloaz.

P. Auffret, bet cure e Pleyin, oaget a 56 vloaz.

P.-M. Lissillour person Plounevez-Moëdec, oaget a 46 vloaz.

J.-M. Gueret, beleg Scouezed ar Groas, e Guengamp, ha bet person e Maël-Pistien, oaget a 64 vloaz.

J. Bocher, person e Magoar, oaget a 75 vloaz.

J. Ar Borgn, person e Lohuec, oaget a 70 vloaz.

Y. Hegarat, person e Plouec-Pontrenv, oaget a 54 vloaz.

Y. Ar C'halvez, bet cure e Rospez, oaget a 62 vloaz.

Y.-M. Quilleuc, person e Tredarzec, oaget a 55 vloaz.

J.-M. Guegan, person e Quemperven, hag a oa bet person er Vouster, oaget a 43 vloaz.

F. Herviou, cure Plounevez-Moëdec, oaget a 45 vloaz.

J.-C. Toullan, person e Prat, oaget a 56 vloaz.

T. R.

Epad an derveziou ienien so bet er sizunvezioù tremenet eur marc'hadour euz a guer K... o veza eat da ober eur bale dioc'h ar pardaez, a zistroe gant prez d'he di. Pa voa deut betek he zor, e velaz, a dreuz ar guer, eun den en he stal o tiskan eur pilerat amann divar ar planken hag oc'h be lacat en he dok. Eun tok kern huel a voa gantha, ho goude beza lakat an amann er guern, e lakeaz he dok var he benn ep ma vije anat e vije netra enhan. An den-ze a ioa eur mignon d'ar marc'hadour,

boas da zarempret he di. Goude beza evesseat mad oc'h an dro vraz great gant he vignon, ar marc'hadour a zigoraz he zor. He vignon a zeuas da gregui en he zorn ; cas a reas zoken he zorn d'he dok, mes, evel a allit cridi, n'hen tennas ket divar he benn. Lavaret a reas dezhan edo pell a ioa oc'h he c'hortoz, hag oa mall dezhan mont kuit.

— Gorto, gorto, eme ar marc'hadour, ne di ket kuit ker buhan. Eun dra bennag ac'h eus da lavaret din. Greomp eun domaden, ma caozeimp, ne velez ket pe guer ien eo ?

Cregui a ra e brec'h he vignon hag her c'has da guichen an tan. He lacat a ra etre an daol, an oated hag hen en hevelep doare ne alle ket tec'het kuit. Neuze e c'huez an tan ken na zoao eur c'hor vraz en dro dezho.

Ar mignon en doa c'hoant ato d'en em denna. Hoguen ar marc'hadour lien dalc'he ato hag a lavare dre ma save tomder beteg enho :

— Ma c'heffemp eur banne guin ! hag e lakeas digas guin dezho. Goudeze e lavaraz adarre : Eun tam bara hag amann a iafe ganeomp ive.

— N'em eus ket a amzer, eme eguile ; hag e claske sevel da vont kuit.

— Gortos-ta, eme ar marc'hadour. Asa, an amann so calet evel ar mean. Lavar din pelec'h e c'hallet lacat amann da voucaat araog he asten var ar bara ?

Ar mignon ne lavare guer. Hoguen dre ma crespke an domder, an amann a deuze en tog hag a goeze a veradou a hed he vleo hag he vizach, hag oa red dezhan seg ha he benn gant he voucheour.

— Petra, eme ar marc'hadour, c'huezi a rez puil, ha me am euz riou c'hoas !

Ar mignon ne lavaras guer adarre.

— Ro din da dok ma hen lakiu aman oc'h an tach, hag e vezo scanvoc'h d'as penn.

— Oh ! Ne roan ket, eme ar mignon, hag hen cas he zaou zorn d'he dok gant aoun na vije lamet diganthan. Hoguen an amann a ioa anter deuzet, ha pa voutraz evelse eun nebeut var an tog, a ziveraz evel eur stifel hag a amanennaz oll he zillad d'ar paour kez den adren hag araog.

Neuze gouscoude ar marc'hadour a lezaz he vignon da vont kuit, en eur lavaret en doa paet ker avalc'h he bilerat amann. G. M.

PRIZ AN ED.

KEMPER. — 4 guenver.		PONT-N'ABAT. — 2 guenver.	
Priz ar c'hant lur.		Priz ar c'hant lur.	
Guinis	17 lur, 38 c.	Guinis	18 lur, 34 c.
Segal	14 lur, 29 c.	Segal	13 lur, 86 c.
Eiz	10 lur, 84 c.	Eiz	11 lur, 38 c.
Ed-du	8 lur, 84 c.	Ed-du	9 lur, 48 c.
Kerc'h	10 lur, 88 c.	Kerc'h	11 lur, 38 c.
Avalou-douar 6 lur, 8 c.		Avalou-douar 5 lur, 25 c.	

Ar Gerant : AR. DE KERANGAL.

Kemper, moulet gand AR. DE KERANGAL, Mouler an Escopti.

FEIZ HA BREIZ,

KELOU A BEP BRO, HA KENTELIOU VAR BEP TRA.

DIGASSET BEP SUL

Da guement Christen a goms ar brezoune.

Eun Abonnamant d'ar Gazeten a goust :

Evit eur bloas	DAOU SCOUET.
Evit c'huec'h miz	EUR SCOUET.
Evit tri miz	C'HUEC'H REAL.
Eur gazeten ebken	DAOU VENNEG.

Ar bacamant a dle beza great araog caout ar gazeten.

ALIOU.

Ar scrijrou a ve c'hoant da lacat er gazeten a dleer da adressi oll d'an Aotrou MORVAN, Beleg e Kemper.

Ar bacamant a dleer da adressi d'an Aotrou SALLUN, ebken. An abonnamant a guemerer e ti an Aotrou SALLUN, librer, ru Kereon, e Kemper.

KEMPER, 18 Guenver 1868.

Epad ar bloas diveza, enebourien an iliz o deus labouret mui evit biscoaz evit he distruja. Ancounac'heat o doa tre ne ell ket an iliz-ze beza discaret, hag o deus lakat ho oll gallout, ho oll nerz, ho oll speret, ho oll ijin evit he discar. Ha pa velont o deus collet ho foab, e counnaront hirio, e scrignont ho dent, e serront ho daouarn hag e c'hourdrouzont en dra c'hellont. Rag arbat eo cridi e crettent beza trec'het. Evel ma zint likizien d'an droag speret, e reont ive eyeldhan. Pa vezont bet discaret en eur c'hiz, e clascont en em zével en eur c'hiz all. Pa ne ellont ket mont dre an or, e claskont mont dre ar prenest.

Setu ama petra lavaront : Ma ne ve mui na Pap, nag Escop, na beleg, ec'h elfemp ober hon treuz brao avoalc'h. E guirionez, ar Pap, an eskeb, ar veleien eo a stourm outho, hag a vir na gasont ho goal ioulou da benn.

An enebour pa deu da glasc en em renta mestr euz a eur gear, a lavar ive evelse. Ma ve casset kuit an oll zoudardet, ha ma na jomle e kear nemet boure hizien ep arm ebet, neuze en em glesemp brao gantho.

Ar bleizi guech all, ervez ar fablemner braz, a lavare ive d'an denvet : Cassit kuit ho chas ha neuze c'hui ha ni a vevo er brassa mignoniach. Ia da, ar chas a voue casset kuit, ha neuze ar bleizi a zebraz an denved ken dibreder ha tra, pa ne voa mui ki ebet d'en em zifen outho. Hag an enebour en eur gear ma na ve soudart ebet da stourm outhan, a zistruchfe kear evel ma carfe. Hag enebourien an iliz, ma na ve na Pap, nag Escop, na beleg d'en em zifen outho, a rafe ar pezh a garfent euz ar gristenien fidel, hag a zistruchfe ar relijion ne vent ket pell.

Enebourien an iliz a lavar c'hoas : Ar merc'hed eo a zalc'h ar relijion ; hi eo a ro ar c'henta kentelioù d'ar vugale vian, hag ho laca da garet Doue, da garet al lezen gristen.

Petra raimp ta neuze evit ho gouni ? Laleomp tre ho daouarn levriou hag a xango nebeut ha n'ellont ar feiz en ho ene, ho lacat da bellaat dioc'h ar bacamant, hag ho boazo da vev ep relijion. Pa on deuzo gallet ober kementse e vezimp ep dalc' ar vistr. Pa n'o nevez mui ar merc'hed a relijion, ne zeskont mui al lezen gristen d'ho bugale ; ho zével a rann evel ma fell deompni, ep anaout na mestr ha Doue, ha neuze eme great he zro gant an iliz. Ma c'heffemp d'ost oll miret na ve casset merc'hedigou da soala d'ar gouni. (Ar c'houchou se ato e goulou an dud difeiz.) Red eo deomp eta ober hon oll gallout evit distrei an tadoù hag ar mamoù da gas ho bugale d'ar gouni. Red eo deomp lavaret ne zescont netra eno, ha na ronn bro nemet coll ho ho amzer hag arc'hant ho zud.

Gouzout mad a reont ar vugale er gouni a vezo desket dezho ho c'hatekiz, a vezo desket dezho anaout ha caret Doue, hag ar vugale-ze, deut divezatoc'h d'en em gaout e penn eun tieguez, ne oulent ket mangout d'ho zro da zeski al lezen gristen d'ho bugale. Hoguen an dud difeiz a garfe e ve savet ar vugale ep coms dezho a Zoue, nag a relijion, evit ma vent oll henvel outho ho nnan, ha ha ma na gafent neuze den da viret outho, da zistruja an iliz santel.

Rom. — Enebourien ar Pap a lavar allez ne zigor Pii Nao he c'hinou nemet evit en em glem evit koskel eur mallos bennag var he enebourien. Mañ k'ellont lenn ar brezeguen ou eus merket lod anezhi er sizun dremenet, e velint ne zonzh an Tad Santel nemet da rei he vennoz, nemet da drugarecat ar re o deus rentel en s'antou bennag dezhan. Rouanet ha pobl paour ha puvich, oll en deus cavet comzou evit ho benniguen ha zistruchfe caeat.

Setu ama hag a ziskuez an devozion so crouez zouavet ar Pap. Daou euz ar zouavet so e kear anezhi a zonzaz en em denna bemdez var ar mcaz evit lavaret ho chapelled dindan eur vezen. Olivez eleac'h ne dehe netra d'ho distrei. Re all a fellas dezho ive ober evelldho abenn ar sizun varlerc'h e voant deg, hag an niver a grescas ke-

ment, ma ne voa mui ledan avoalc'h scourrou ar vezen
 Olyez, evit ho dizireoli. Eur manac'h euz a guer, o vellet
 se, ja guirigas dezho eur chapel en he iliz evit ma en
 ep zestumjeut eno da lavarret ar chapelad. Divezatoc'h
 eun Eskob a reaz eur Vreuriéz euz an assamble-ze. Ous-
 pen mi s'oeur Vreuriéz, ha vardro eis cant all a c'houlen
 beza recevet enhi hag a lakere en amprou araog ho
 receo.

Perigueux. — Ar sizun relijuz a Berigueux a gomz
 euz ar valeerien-bro-ze a ia da verza levriou fall var ar
 meaz. En eur bourg euz an escopti-ma, emezhi, eun
 doare marc'hadour, eur zam pouner gantha var he
 choug a guirigue da dud ar gueriad-ze levriou caer
 scrifet emezhan, evit ar iaouankiz. Lavaret oue dezhan
 dispaqa he varc'hadourez. Setu hen eta o tiskuez levriou,
 golojou brao varmezho, ha ne voant ket zoken levriou fall.
 Hogen unan a ioa eno hag en doa bechet calz, hag a
 anae fignessagu ar valeerien-bro-ze. Hema a dosteaz oc'h
 seouarn ar marc'hadour, hag a c'houlenmaz outhan gous-
 tadig ha ne voa ket gantha eul levri a hanvaz, eul levri euz
 ar re falla so bet scrifet. Neuze ar marc'hadour a iez
 da vouelet he gasset, hag a dennaz ac'hano al levri a
 c'houlennet outhan, ha calz a re all ker fall hag hen,
 en eur lavaret e cave calsguers d'al levriou-ze.

An hini en doa goulennet al levri, a grogaz enna, hag
 hen disquezas d'he amezeient en eur lavaret : « Va mignonet,
 setu aze eul levri hag a zo guet da zigas ar vosen
 en hon touez. Ma teufe hor prijeon hor c'hoarezet, hor
 merc'hadour d'he lenn, emant eonnetoll. » Petra
 ramp-ni oc'h al levri-ze ? — *En tan ! en tan !* eme ar
 re a voa eno ; hag evel ma edo o viri eur forn en eun ti
 e kichen, al levri fall a voue stlapet er forn e creiz an tan.

Ar marc'hadour en doa c'hoant difen he levri. Mes n'oa
 ket ar c'hrea, ha red oue dezhan lezel devi he varc'hadourez.
 Ouspen-ze an oil goueriadet a voa eno en em
 lakeas da grial ha da ober hu varnezhan, hag e voue red
 dezhan mont ac'hano lostek.

Ma ve great eun diguemer evelse da guement reder-bro
 a ia da verza levriou fall var ar meaz, e lessent ar c'henn-
 vers euzus-ze a gostez, hag e clascent eur vicher all ben-
 nag dibec'hoc'h da c'hounit ho bara. G. M.

An Aotrou'n Escop Pressigny hag an Aotrou de la Mennais, er bloas 1790.

Ar Aotrou Pressigny, escop Sant Malo, a zigouezaz
 eun nosyez, er bloas 1790, e ti an Aotrou la Mennais.

An Escop a ioa red dezhan tec'het. Da Jersey en doa
 sonch da vont, hag ac'hano ec'h espere gallout ren
 c'hoaz he escopti. Araog kuitat he escopti, an Aotrou
 Pressigny a fell dezhan lavarret an oferen. Ia, mes piou a
 responto ?

— Me, eme Ian Vari, a voa neuze eur potrig eis pe
 nao bloaz, hag a voa chomet en eur c'horn eur ar gambr
 da zilaou ar gaoz etre he dad, he vam hag an Aotrou
 Escop.

— Gouzout a rit-hu respontou an oferen, va buguel,
 eme an Escop.

— Ia, Aotrou'n Escop, responto eb ez ne ord asov

— Hag ho katekiz, her gouzout a rit-hu ive ?

— Ia, roll peñn da beñn.

— Guelomp, eme an Aotrou Pressigny, hag en em
 lakeas da c'houlen katekiz oc'h ar potrik. Goude beza
 great eur goulennennag outhan, an Escop a lavaraz :
 « Cleo, Iannic, va map, me ia da vont kuit, ha ne ouzon
 ket petra deun da veza, ne ouzon ket peur e tistroin evit
 da gouzemenma. P'eo guir ec'h ouzot mad da gatekiz,
 ez an da bidi Doue evidout, ha varc'hoaz araog va ofe-
 ren e roin ar gouzemen dit. Da feiz, va buguel ker, a
 deui marteze meur a dra d'he amprou, da viana pa ez
 pezo recevet ar Speret Santel ha caracter ar c'hristen
 parfet, e vezo assoc'h dit derc'hel mad.

Antronoz vintin eta Ian-Vari a golesseaz, a gommuz
 niaz hag a voue couzemennet. Goudeze epad ma tebre
 an Aotrou'n Escop eun tam bennag buana ma c'helle
 araog en em denna ac'hano ha mont d'an harlu, an Aotrou
 Lamennais a glaske he map evit ma receffe bennoz an
 Escop. Hogen den ne vouie peleac'h oa eat. Mes ep da
 le her gueljo o tont, eur pacadig dillad gantha, hag eur
 vaz en he zorn evel eur breizad o vont da bardona.

— Da beleac'h ez ez evelse-ta, Ian-Vari, eme ar vam ?

— Me zo o vont gant an Aotrou'n Escop.

— Arabat eo mont al lod tud ze da ambroug an
 Aotrou'n Escop, ne ket re a drouz a ve great, ha ne ket
 lacat cregui enna eo a rafet.

— Me ne ket da ambroug an Aotrou'n Escop eo er
 an ; da jom gantha eo. An Aotrou'n Escop a ia etouez ar
 brotestanted ha n'en devezo den da respont an oferen
 dezhan.

An Aotrou Pressigny o clevet kement-se a zirollas da
 vouela.

— Va map, emezhan, me ho trugareca ; mes ne allan
 ket ho cas ganhen. Ne ouzon ket ha me a zistroin, ha
 me a zigouezo zoken el leac'h ma fell dim mont.

Ama ar potrig a deuz ive an daoulou en he zaoulagad.

— C'hui zonch deoc'h, emezhan, em euz aotrou vont
 ganeoc'h ?

Brema oun couzemennet, va c'hassit ganeoc'h : e hur
 zesco din al latin, am gra beleg, ha n'ho kuitan morse.

— Va map, eme an Escop, red eo ehom gant ho kerent.

— Me'm eus lennet gouscoudé, eme ar buguel, e
 lavare Sant Laurans d'ar Pap Sant Sixt : va zad, peleac'h
 ez it-hu ep ho map ? Tad Santel, peleac'h ez it-hu ep
 hoc'h avieler ? N'oc'h ket boas da lavarret an oferen ep
 unan da respont, ha perag ne respontfen-me ket an ofe-
 ren deoc'h ? C'hui am grai Avieler divezatoc'h.

An Escop a bocas c'hoek d'ar buguel, hag a lavaraz
 dezhan evel eur profet : Va map, mar em bez izom euz
 a unan bennag e Jersey, me ho coulénno ; da c'hortoz,
 deskit mad al latin, ha pa deun en dro, me ho crai be-
 leg.

Pa voa deut Ian-Vari Lamennais d'an oad a ugent

vloaz, en em dennas da Bariz elc'ac'h ma voa assoc'h
 beva dianavezet. Eun dervez, en iliz ar missionou dia-
 veas bro, ez ea da respont eun oferen. Pa glavas mouez
 ar beleg, se teuas da zonch dezhan euz an oferen bennag
 hag en doa gnelet ha clevet kentoc'h Pa zistrois gou-
 deze ar beleg evit an *Dominus Vobiscum*, hen abaveaz
 mad. Va Escop eo, emezhan, An Aotrou Pressigny.
 Eat d'ar sacristen, en em daolas d'he dreid, en eur lavaret :

— Ha ne ket, c'hui eo an Aotrou'n Escop Pressigny ?

— Ia, va map, ha c'hui, piou oc'h ?

— Me eo Ian-Vari Lamennais.

An escob a vriateas caloneg ar buguel en doa bet
 e'hoant d'he deuilha en harlu. Goulen a reas digantha
 petra en doa great euz he amzer abaoue m'oa bet couze-
 mennet.

— Mad, eme an Escop, hirio oun c'hoaz escop Sant
 Malo, abenn eun tiebeut derveziou ama ne vezin ket.
 (An Aotrou Pressigny a iea neuze da Vezeancon.) en em
 bourchassit abenn varc'hoaz, ha varc'hoaz e roin deoc'h
 an uiz a abostol.

An Aotrou Ian-Vari Lamennais ne alle morse, en he
 gasni, comz euz an traou-ze ep scuilla daelou.

(Tennet euz ar gazeten *Revue de la Presse*.) G. M.

Zouaved Bro-Holland e arme hon Tad Santel ar Pap.

Ann Holland zo eur rouantelez hanter-bihanoc'h eghet
 Frans. Hag e peurleniz ar bed en em gav ar vro-ze ?
 Egre ann anter-vez ha sae-heol, war-zu ar Belgig hag
 ann Alamagn. Ann darn-veia euz ann dud er rouantelez-
 ze a zo protestanted. Bez'ez euz ivez enn-hi kalz a gatho-
 liked, hag euz ar re-wella, hep arvar.

Ha meulet mad eo bet zouaved Holland, a c'houlen
 eun den euz a Rom ? Ia, meulet mad eo bet ar gatho-
 liked gwion, hag ar soudardet kalounek-ze. Meulet eo
 bet Per Jong, unan dezho, soudard nerzuz ha kalounek,
 a ziskar pegarek Caribaldian enn dro d'ezhan, hag en
 em laka goude war ann daoulin evit mervel e-c'hiz eur
 c'hristen. Ha meulet eo bet ar brezelekaerien dispart-ze
 a glaske kement ar verzerint ha ma klaskent ar victoar ?
 Ia meulet eo bet ar soudardet goullet e combat Mentana,
 pehini o veza bet trouzet d'ezhan he beultrin gant tri
 boled, a laka he viz war ar c'henta toull, o lavarout :

enn hano an Tad ; war an eil toull : enn hano ar Mab ;

war ann trede toull : enn hano ar Spered-Santel ? Ha
 meulet eo bet ar soudardet victoriuz ha devot-ze, enn
 em daole d'ann douar, enn iliz Monte-Rotondo, evit
 poket da eur grucifi oa bet flastret ha bruznet dindan
 an treid ? Ia meulet int bet holl, ha gant-ho, zo bet
 meulet ann Holland kalounek-ze, ho bro, a ro gant
 larghentez d'ar Pap, d'eur San-Per evit ezomou ann Iliz
 hag euz-penn nerz ha goad he bugale evit hen difenni.
 Per Jong, gloar hag enor he vro, er c'hombajou diveza-
 man, a zo diredet unan euz ar re ghenta, evit difenni ar

Pap ha douar Sant-Per. Hema ann oferen dezho ne vo
 nemet-han evit harpa he c'hozn. Eunn d'ar rouez de
 lin ar bloaz 1865, ar vamm-se a lenn en ann gant
 e kuitag paoured Jaouank Holland he c'hozn he
 bro evit mont d'eur d'ann d'ann d'ann d'ann d'ann
 « *Ac'hanta*, eme-z-hi, d'he mab, *Sed d'ann d'ann d'ann*
 « *kaloun*. » — Va mamm, eme ann den iaouank, ann
 karfec'h, me a rafe kement all. Mervel o tiffenn ar feiz
 hag ann Iliz, a veze joa hag ann enor evit mervel. Bre
 ar c'hombajou-ze, ar vamm a zeud da sonjal he frouenn
 Doue he mab digant-hi, hag hep mab he mab, eme-z-
 hi n'ec'h eus nemet mont. Eunn deiz he mab goul
 de, Per a iez da lavarout kenavo d'ann d'ann d'ann d'ann
 he barrez : « Mes, ma mignou, eme an Aotrou, pe
 rit-hu ? Perak mont ker pell hag evit difenni eur
 meaz a vro ! Aotrou Mear, excusit, ma map, ne vo
 ket da zifenn eur roue a ziaveaz bro, ann d'ann d'ann
 d'ezhi a zo bro ann holl dud catholiek, ne vo ket da
 evit roue. Evid ar roue-ze ez ound d'ann d'ann d'ann
 ma buez zoken. Bez'ez deuz bet ann d'ann d'ann d'ann
 pez a bromete. Pa oa e k'hoadi ouz he vigo d'ann d'ann
 kuitat, unan g'hoaz, a lavaraz d'ezhan : « Bez'Per, a skod
 stard war ar zho, ne ket gwir, mar deont da ober Bre-
 zel d'ar Pap ? » Oal ha tskei ar roue stard war he zho
 ma klevot menek euz ar se-ze hag he gred en deiz !

An deiz unan warno ughent a viz d'he v'ez, Per
 Jong, goude beza bet unan dezho, soudard nerzuz ha kalounek,
 d'he vamm. « Va mamm, pa lavaret d'he mab, eme-z-
 testanted eo pravedet kador Sant-Per, respontit, he ket
 gwir kement-se. Per Jong hag he ghender, eun den
 deuz he bisitet, hag ho deuz gwellet eme ker souc'hen
 he zao na hello na diale pebe, na Vietri, D'ann d'ann d'ann
 he lostennad trubardet, ha ma achui he diskad. Euz
 beur-achui he lizer. Per Jong a re d'he letanant he
 diou na d'leur ket ankounac'hant. Hon-c'hoaz he
 mad meurbed, dreist holl, hon letanant a c'hall omp
 hon Eal-mad. Ar soudard Jong hag he letanant, eun
 men a die beza lazet, ar memes deiz, em gombad
 ruz-ze euz a Vont-Libretti, e pehini pevar ughent
 zouav a stoumaz euz daouzek, kant garraldian, ha ne
 oant ket bet trec'het gant-ho.

Skiva a rea d'he vamm, ann daou war u-ghent a viz
 gwengolo, ughent deiz araok ar gombad e kollaz ann
 han he vuez. « Va mamm, e'houi a scriy d'ann d'ann d'ann
 er vro ounn-me bet great caporal. Gwell eo klevout
 kement-se eghet klevout e vamm bet ann d'ann d'ann d'ann
 gwir nag ann eil nag eghile. Ne deont d'ann d'ann d'ann
 ket evit-se, her gouzout a rit, ez ann d'ann d'ann d'ann
 d'in beza zouav hepken, hag euz g'hoaz, ann d'ann d'ann
 c'hoaz hemenner d'in. Ouz-penn-ze, da gombad
 d'eo ret, da goll ma buez evit difenni ann d'ann d'ann
 c'houlen ket Doue ma buez digan-en, e tistroin d'ann
 vro evit labourat evel diaghent.

C'houi a garte, va mamm gher, gwelout eghent
 tistrei d'ar vro gant kuiskamant g'hoaz. Gwir eo
 kement-se rafe plijadur d'e-hoc'h, mes c'houi a
 neuze pegher chenchet ounn, ne ket c'hoaz deut ann

eur peza pevar real a huguent real memes ivit souten tron ar Pap, evit derc'hel en he za ar religion. Hon tud coz a vouie mervel evithi. bag o bugale...

Setu aman ar peza a ro a galoun vad iniennou euz a Blouzeniel:

Table with 2 columns: Item and Price. Euz tad a famil... 20 l. E Vugale... 15 Euz Den yaouank... 5 Eur Servicherez... 10

Etrezho assemblez... 50 l.

Eur C'houerid a Blouzeniel.

Euz a Gommanna e scrifer ive:

Goude cals offransou e deus roet dija evit hon Tad Santel ar Pap, eul labourerez douar eus Gommanna pehini ne c'houlent ket beza anavezet gat an dud, a ro c'hoas 10 lur evit sicour Vikel Jesus-Christ.

Cazetennoù Bro-Zaoz a lavar e tle an Aotrou Darboys, Arc'hescop Paris, beza hanvet Cardinal.

Ervez eur gazeten euz a Zant Brieç, ez eus bet taguet en escopti-ze gant ar c'holera, epad ar bloas tremenet, tost da seis mil den; mes ne deus maro gantha nemet daou vil cant pemp ha daouugent.

Mont a ra atao souldardet d'en em lacat en arme ar Pap. Er sizunvezioù diveza-ma ez euz eat tremen daou c'hant.

Ervez keleier an Itali, itronezet catolig a Vro-Zaoz, hag a so brema o chom e Rom, a ia da brema tachen vrezel Mentana, evit sevel eno eun iliz hag eur gouent.

En Aljerie, eus enn dienez ar vrassa; mervel a ra tud gant an naoun. Aotrou Arc'hescop Aljer en deus scrifet da gristenien Frans da c'houi sicour an dud vad evit ar re a c'houzaon naounegez er vro-ze. Eno ez eus bet dioc'htu daou vloavez sec'hot ha ne zave couls lavaret netra en douar; goudeze eo deus ar c'hilleien raden da zistruja ar pezig a ioa savet. An dud estren, da lavaret eo, an dud eat di da chom euz ar broiou all a ell c'hoaz beva en eun doare bennag dre ma ouzont tiecaat guelloc'h, tud ar vro avad, da lavaret eo, an arabet, a varf e guirionez gant an naoun. Calz anezo so meur a viz zo n'o deus ken da zibri nemet deliou ar guez hag ar guesot pere a heuront evel loenet. Ho guellet a rer, en noas couls lavaret, var an hentchoù bras tost d'ar c'heriou, ha pa gavont eur c'harrat teil bennag o tont euz a guez, en em daolont varnezhan d'he furchat, hag e loncont an oll londouriaçh a gavont e touez an teil-ze. Tenna a reont euz an douar gagnou maro dre glenvet, hag al labourerien douar estren a so eno o deus poan o tional ho loenet outho. An dud reuzendic-ze a gaver maro pevar ama, c'huec'h ahont, deg en eul leac'h all...

Cazeten ar Meziou a lavar ez a ato an ed var gueraat, hoguen cazetennoù all zo hag a assur e teu kement a ed

euz ar broiou all e Frans ma tle, ep mar, guellaat he varc'had.

Dimerc'her 15 euz ar miz, corf ar zouav Urban de Quelen a behini on eus comzet c'hoas dion pe deir guech, a zo digouezet e Kemper eleac'h ma zeus canet eur zervich evithan en ilis Catedral; ha goudeze eo casset da Hanvec evit beza laket e bez he dud.

Ar ienien a guendalc'h, hag ervez ar c'hazetennoù ez euz erc'h teo e cals carterioù. En escopti-ma zoken ez euz ive, a leverer, e lec'hiennou, bete ma zeo digouezet gant ar re o deus bet charreou da ober er sizunvezioù-ma, rancout lezel ho c'hirri carguet en hent. Hoguen e Kemper n'eus tam erc'h ha mar deus bet eur bluc'h bannag, eo bet teuzet dioc'htu. G. M.

An hini a ia eur vech da Rom, a leverer, en deus peurlieusa c'hoant da vont adarre, da viana pa en deus bet amzer da evessaat oc'h an traou caer a veler er guerze ha d'en em ober dioc'h he guizioù. Evelse ar Pap Gregor c'huezeg a voa boas, dioc'h ma leverer, da c'houlent digant an dud estren a ziguemere pa vezont var ar mare da guitaat Rom: Pegueit a ioa abaoue ma edont er guer-ze. Mar lavarent ne voa nemet eun nebeut dervezioù, nao pe zeg dervez, ne responte dezho nemet ar guer-ma epken: Kenavezo. Mar disclerient avad e voant e Rom abaoue daou, tri miz, e lavare dezho: Kenavezo eur vech all! Rag cridi mad a rea e teujent adarre.

Dirag eul lez-varn e tigasset en dez all eur c'hreg paour tamallet da veza laeret eun tam kig bennag divar stal eur c'higuer. Hoguen ar baourez kez pehini douetus n'oa ket boas da laerez hag a ioa credabl pouzet gant an naoun pe an dienez, en em guemeraz en eun doare ker balc'h da ober he zaol, ma voue paket dioc'htu. Dirag al lez-varn e respontaz ive ken dievez ma c'houlennaz ar barner: Daoust hag ar c'hreg-ze ne deus ket a benn?

— Ne deus ket a benn? eme ar c'higuer a voa eno; me a lavar deoc'h, Aotrou barner, e deus c'huec'h da nebeuta; rag din-me e vanc tri benn maout; daou benn leue hag eur penn ejen!

PREZ AN ED.

Table with 2 columns: Location and Price. KEMPER. — 14 guenver. Pont-N'abat. — 9 guenver. Guinis... 47 lur, 28 c. Guinis... 48 lur, 34 c. Segal... 44 lur, 37 c. Segal... 43 lur, 96 c. Eiz... 44 lur, 29 c. Eiz... 44 lur, 38 c. Ed-du... 9 lur, 03 c. Ed-du... 9 lur, 58 c. Kerc'h... 44 lur, 02 c. Kerc'h... 44 lur, 50 c. Avalou-douar 5 lur, 50 c. Avalou-douar 5 lur, « c.

Ar Gerant: Ar DE KERANGAL. Kemper, mouillet gand Ar DE KERANGAL, Moulter an Escopti.

FEIZ HA BREIZ,

KELOU A BEP BRO, HA KENTELIOU VAR BEP TRA,

Digasset bep sul da guement Christen a goms ar brezounee.

Conditionou evit caout ar Gazeten:

Evit ar FINISTER, COSTEZ-AN-NORD hag ar MORBIHAN: evit eur bloas, daou scouet. Evit c'huec'h miz, pevarzec real. — Evit an departamantoù all, evit eur bloas, seis lur. — Ne vezo mui roet ar Gazeten evit tri miz. — An abonamant a gomins en deis kenta euz ar miz, e pehini e vezo bet goulennet (nemet ar c'hontrol a ve merket). — An abonamant a dle beza paet araog caout ar gazeten. — An adres a dle beza merket selear ha freaz. — An hini ne zigas ket en dro ar c'hontrol, gazeten a vezo goude ma zeo echu he abonamant, a zo consideret evel abonet a nevez. — An deis ma c'hechu an abonamant, a vezo merket var an adres. — Evit ar re zo restet ho seamanchou, n'o deus nemet lenn an noten a vezo laket e fin pep gazeten. An abonamant a guemerer e li an Aotrou KERANGAL, moulter an Escopti, ru ar Guiguerer, n° 18, e Kemper. Dian Abrou, KERANGAL epken e tleer adressi ar peamanchou ha kement a zell oc'h servich ar Gazeten. Ar scrijôù da lacat er Gazeten a dleer da adressi, evel diaraog, d'an Aotrou MORVAN epken.

An Aotrou Salaun o veza goulennet beza disarguet euz ar zervich a rente d'ar Gazeten Feiz ha Breiz, an Aotrou KERANGAL so roet ar garg-ze dezhan. Hag-ze azaleg ar c'henta a vis c'huervrer e tleer adressi d'an Aotrou KERANGAL kement a zell oc'h an abonamanchou hag oc'h servich ar Gazeten.

KEMPER, 25 Guenver 1868.

Evel ma on doa discleriet er zizun dremenet, corf an Aotrou Urban de Quelen so digasset euz a Rom d'he garter. Digouezet eo e Kemper d'ar pevarzeg a vis guenver, hag eo bet casset da dremen an noz e chapel ti ar Retred eleac'h ma zeuz eur c'hoar dezhan Leanez.

Antronoz, d'ar pemzeg, eus bet canet eur servich evithan, pe kentoc'h, great enterramant ganthan en ilis catedral, pehini a ioa guisket ha kempennet evit kementse. Diaze ve guellet caeroc'h enterramont. An dud a iliz, etre klouer ha beleien, a ioa var dro tri c'hant anezho, ha laket var zion reng, e savent eur brocession, ep distag ebet, azalek ti ar retred beteg ar gatedral. An iliz a ioa lenn. Goude an Aviel, an Aotrou n'Escop so savet er gador, hag en deus great eur brezeguen a so bet silaouet gant ar brassa evesdet. Ne ellan lavaret ama nemet eur guerig euz ar brezeguen-ze.

« Evit gouzout, eme an Aotrou n'Escop, pebez servich a rent an dud calonek-ze a ia da zifen an ilis Santel, e ve red anaout mad petra eo Rom, petra eo ar Pap. Rom eo penn ar gristeniaçh; eno emma destumet kement e deuz ar relijion a zantela, ar relegueier santela ha priussa e deuz an ilis.

Ha petra vije deut an traou santel-ze da veza, ma na vije eat tud vad ha caloneg da furet outho da goeza c'tre daouarn an dispac'herien, etre daouarn enebourien difeiz? Ar Pap eo Vikel Jesus-Christ, ar sclerijen a bar divar d'ron Sant Per var an oll broiou, hag ar broiou ma c'hean ar sclerijen-ze da bara-varnezho, ne veler enho ep dale nemet erroliou a bep seurt o pulluc'hi; ar gaou, an denvallien a deu d'ho golo; ha ne ket epken ar feiz eo a zo mouguet er broiou-ze, mes ive dont a ra da der-

ri al liam a zalc'h unanet tud eur c'harter, en hevelep doare ma venn pep tra er broiou-ze freuza, frailla, coeza en ho foull.

Ar re zo eat da zifen Rom ha vikel Jesus-Christ o deus gouezet kementse. Gouezet o deuz ouспен o doa izom da zifen he dra d'ar Pap, en doa izom ar Pap da veza en he dra evit cas ar sclerijen-ze dre ar bed. Ar virionez-ze zo hat anavezet hed ar vech gant kement o deus caret an iliz, ar guir relijion.

Epad an tri c'hant vloas kenta euz an iliz, an oll babet a varf dre ar verzerinti. Ar c'henta Impalaer a deu da veza christen, a vel no all ket ren ar Pap hag then er memes leac'h, hag e les Rom gant ar Pap, evit ma vezo eno en he dra, evit ma c'hello ac'hano gouarn an iliz, evit ma c'hello caout gallout ha belt avoale li e pep guiz da ellout lavaret d'ar briuset: Setu aze ho kuirioù, ha d'ar bopl: setu aze ho teverioù. Divezatoc'h Charlemagn a deu da startaat tron vikel Jesus-Christ, hag ar re so deut var he lerc'h o deus great evel dhan.

An dud caloneg, eat da zifen Rom hag ar Pap, o deuz eta rentet servich, ne ket epken da Rom, ha dian Pap, ne ket epken d'an ilis, d'ar feiz ha d'ar relijion, mes c'hoas d'an oll gristeniaçh, d'an oll broiou, ha rentet o deus servich dezho e pep guiz.

Setu ar peza en deus great hor souldart caloneg Urban de Quelen. Ne fell ket din, eme an Aotrou n'Escop, he lacat e kem gant den. Caont a rafen goude de lievele diguezioù hag a zere outhan. Pa voa maro ar Brezelaer braz ha brudet Du Gueselen, he gorf maro a lak e guerri ar c'heriou dezhan. Ar c'herion ive o deus digoret frank ho dorioù evit diguemeret corf Urban de Quelen. Caera a oufet da lavaret anezhan eo ez eo maro evel hor Zalver, paour, dilezet, pell dioc'h he dud, lazet gant enebourien Jesus-Christ hag he ilis. Ar peza a ell lavaret c'hoaz evit he veuleudi, eo en deuz ar Pap he man comzet anezhan evel euz eur meizer.

Setu aze eur skeudennik euz ar peza en deus savet an Aotrou n'Escop. — Goude an oferen canet gant an Aotrou Eyraud, Vikel-Vraz, an Aotrou n'Escop he luan en deus canet al Libera, ha goudeze ar c'horf so bet casset d'an hent houarn, dre ar c'hae, gant ar memes procession evel ma voa bet digasset euz a chapel ar retred d'ar gatedral. Ar c'horf so eat goude creisdeiz da Hanvec, ha

greet brezell d'an Iliz; avoalc'h a vrezell, evit rei da ana-
ont, scler, kamoll, ne vizez mui, peil a zo, en e za, anez
ma, dorn, Doue ac he arpa; lay e peb amzer an ifern, en
deuz stourmed ouz an Iliz; mes, abaoù 20 vloeds, var an
dro, e reer startoc'h brezell dezi, ne deo ket mui gant
comzou ha lavarou ebken, mes ive gant ar c'hleze. A dra-
gare Doue, tud a nerz ac a galon a zo saved, ac o deuz
greet da re an ifern enoam c'hoaz adre.

Aman, gant doue rac mont dreist ar roudenn, e rangen
lammfret dreist ur pennad, marteze ar c'haera, eus prezege
goude Hanvec, petra bennac kement a zo bet lavared eno,
ne denn nemet da druez d'an dud keiz, dalled avoalc'h
evit mont eno. Jesus-Christ ac e Vikel var an douar, mes
gouzout a rit pegeu ricluz eo coms divar benn an aferou
etre, ha da bro.

Goude beza diskuezed pegement a veuleudi a zo dleet da
Urvan de Quelen, evit an nerz calon en deuz diskuezed,
ma teue tud eus meur a leo, da Rom, da zaludi gant calz
a enor, an den iouanc ganed e Breiz, ha saved, pa ne oa
c'hoas, coulz lavaret, nemet crouadur, evit mont da her-
zel ouz soudardet an ifern, ac evit difen an urz vad; gou-
deze, en difen, eo bet lakeed dirag an daoulagad, an enor
ac ar c'hloar a deun, var e vro Urban de Quelen, ac ive
ar vad en deuz greet d'an enoam. Ia, enor d'ar vro a zo
enni tud a galon ac a nerz, a zao uhel avoalc'h o spered
ac e'halon, da ziscuez d'ar bed oll, pelec'h ema ar
virionez, an enor ac ar guir c'hloar. Ar zouavet eo a zis-
cuez-se dre o buez ac o maro. Ouzpenn ma zint bet guele-
d, ur rumad bian a dud, o telouet penn d'ar armeou braz
deuz a herz an ifern, da glasc tenna o gant digant ar gis-
tenien, ouzpenne, ez int bet gueleo o hemouet guez ouz ar
re n'o doa picun da gaout (truez nutho. Ma eur gear, tef,
pe peder leo diouz Rom, ar c'holera a zafare, an eib der-
vez dre egile, cant den bemdez, var 8,000 den. Ac o liet mi
maro o zud, ne gavent nicun, mui da gaout truez outo, da
drei anezo varzu ar baradoz, d'o hiena, d'o c'hass d'ar bez.
Pere eo a gemero truez ouz tud Albano, an dud keiz?
Tud eus a bell, bet da Rom, da zifenn Tad an oll? Zouavet
ar Pab. O leus pelec'h eo ar re-ma, eme tud Albano?
petra int? neket tud int? elez eo, elez eo e racont beza!
O! enor d'ar vro, o deuz ar seurt tud da zioueret! Ia, pa
anavezo ar bed, petra zo dindan ar viscamant-se, ra zoug
ar zouavet, pa anavezint pe, calonou a zo dindan ar mod
dillad-ze, e vezo santed ar galon o tene, beveich ma
paro an daoulagad var ar viscamant-ze, e vezo pebed
bennoz Doue var ar re en doug! bennoz yar ar vro, bennoz
var ar barrez, bennoz var an ti a ro ar seurt tud. Mes,
neket gloar ac enor ebken, mad a deu ive, mad an oll, eus
buez ac eus maro an dud benniget-se. Sclerizenn d'ar
sperejou, mes d'ar c'halonou, baradoz d'an enoam! Scler-
rizen da seadurez vad da sperejou. An devalzenn, siouaz
a ia var ar gresc en on amzer. Caer a zo pompadi aundes-
cadurez a roer brema, ar sclerion, ar sclerizennou nevez,
caer a zo lavaret: Araog! araog! caer a zo, ez na ar bed
var e gliz, var fallaat.

Ne ket stantaat eo a ra an tiez a zo enno, mistri ha
mestret ar gisten, tadou ha mammou da lacaat pedi Doue
diouz an vez ha droz ar mintin, da guelenn mad o bugale
tud o zoug ar gisten: allaz! rouesaat eo a ra an
tiez mad-se. Pious a zo ouz ar bed, ha dai tre da fall?
Piou, pere a zesc d'andoue Doue ac e garet? Ministret Jesus-
Christ, pastoret an enoam, var bouez ma vezo ar pennou

tiegez a unan gantho, var bouez poania mad a viro ma
dar ar bed tre da goll, mes o labour a zo labour tean-
luduz, labour hri. Piou, pere o zicouro muia, ac a gal
ar buania, ar herra, ar c'henna labour? ac a zesc, eo
unni taol ber ar mad d'an oll? Piou a zesc dezo, en eunt
gentell ver, ar virionez, hac an ent eon Piou nemet as-
re a stail o goad, a ro obuez evit al lezenn gisten. Ar re-
ze o scrie ar virionez e calonou an dud gant o goad, a
re evit scleriant hac kentella an dud, e her amzer, ar pe-
a ra ar re all dre boan hac hir amzer. Etouez ar c'henteillou
o deuz an dud ar muia izom anezho, etouez ar virionezou
a zo izom d'ho lacaat da bara, da lugern muia, e daou
lagad an dud, ema ar virionez ma. An penn hac an mestr
var an oll, an hini n'euz nemeta ha ne fazi amez an hini
a zo atao gantha ar virionez hac al lezenn vad, an hini a
gombz a berz Done, eo ar Pab. Varzu ennez eo e ranker
trei, ennez eo a renker silaou, evit mont da gaout Doue;
neuz ent all ebed, lezenn vad all ebed. Setu eno, ar
virionez, a ranc brema beza discleriet heaz, evit del her-
ar bed dress en e za. Ia, varzu eno eo red ma tre, varzu
Rom eo red mad sellet, mar c'hoantaer gouzout de be-
ent mont, pe du ema ar baradoz. Ia, evit sur, eno ema
silvidigez ar bed oll. Mes, piou eo, pere eo, ar re a laca
dud da drei var an tu-ze, varzu an hini a zo ar virionez,
hac ar sclerizen vad gantha, hac al huezou an be? Pere
nemet ar zouavet, soudardet benniget ar Pab, ar re a
scrie an gant o goad, e calonou an dud, ar Verzeien
benniget. Ar re-ze eo a zao uhel avoalc'h o spered hac o
c'halon, evit gueleo o unan, hac evit deski d'ar re all
pelec'h ema ar c'hloar, eurzet an dud, hac o guir
noblans. Rac, en eur enori Urvan de Quelen, neket
lignez vraz eus Breiz eo a glasker enori hac uhelaat dirag
ar bed, eur c'hristen uhel e galon, eo a ziscuez hac a
enor ar aman. Hac e vise bet Urvan o elasc e voad, adi da
di, e parrez Hanvec, ma vise digouezed gantha ar seurt
maro, hac e digassed d'e barrez d'an douar benniget, ni
a vise bet en Iliz-ma, en dro deza, c'hui aze ha me ama,
ar c'hristen caloneg eo a enoromp, an hini goude beza
kuiteed e vro a vianic, da glasc ar verzeien evit Iliz
Jesus-Christ; goude beza bet o riscal e vuez, ha meur a
vech tost ar maro deza, bet toc hor gant ar c'holera, bet
pared; evit gounid e gurinnen er brezell, o tiffenn al lezenn
gisten, evit ar verzeien all.

Setu pennoz e vuez hac e varo ar scleriant ar sperejou,
a ro descadurez, kelennadurez hac an aouderez vad ar
lezenn gisten. Quspenn a ro a vuez vad. Soueier ar dind
da ra, o tiscuez dezo petra a hell abber an hini jar deuz
calon. Brema, coulz ha guec'h-all, var goad an
sao merzerien. Pa zavas ar brezell a rar brema d'an Iliz
ne oa nemet eun nebedic tud a galon hac a nerz, da vout
da zifenn al lezenn vad. Merzerien o rag darn a gavas
ar maro, hac ker benn, e savas re all a leiz da gemer
o flas. Ur vro, bro Holland, es penn kenta, ne doa
rejmiant ar zouavet, nemet dec, mes, eur merzer a eo en
qzouez. Per Jong, eun den a nerz hac a galon dreist an
oll, en eur gombat ha ne oa nemet eun nebedic da arpa
quz eur vandennad vad eus arme al laeron hac an dud
fall, a velas pevarzec anezo o coveza dindan e daoliou ken
na oe feaz e unan. Ha neuze, eet e oll nerz digantha, evit
rei e ere da Jesus-Christ hac e vuez evit an Iliz, santet, e garib
tigras e zivrec'h, e lacaat anezo e doare pa vize bet yar
gropaz, hac o sellet ouz an be, hac evel an seleur eus joa

ar baradoz o para var e dal, enn doe taol ar maro, hac R
oe evel, en dail-ze tremened eun arde laouez, var hez
evel eall muez hoar o redet var e yuzellou, hac en dro
deza en e gichen, soudardet eus a re an ifern, maro ive,
ha scriuz da velet! U c'holl braz oa, coll eun den ar
seurt Per Jong, ia, mes var e c'hoad, sculleed e savas re
all, ha bro Holland, eleac'h dec zouav, e deuz brema meur
a gant, hac ar barrez ebken, hac i biannoc'h eget Hanvec,
e deuz roed 25. Setu pennoz, var goad ar verzeien e sao
merzerien. Ar seurt vad-ze a ro seuil, hac a zigor da bep
seurt mad. Euruz eta ar vro, a veler enniar seurt seueriou.
An oll, evit gunt, n'int ket evit mont, piz avoalc'h, e
roudaou Per Jong, hac Urvan de Quelen: an oll n'int ket
gavet da eun deuz var dachenn ar brezell-ze, mes, an
oll n'ho anadit hac caret Jesus-Christ hac e Iliz, evit
caout digor er baradoz. Urvan a zesc dezo ar gentel ze, a
ro: dezo ar seurt, a zesc d'an oll sevel atao enu
eunt til gant Jesus-Christ hac e Iliz, lezel peb tra evita.
Urvan a guitas tud vad, e lezas e vro, evit deski d'an oll
ez euz en vro all caeroc'h. O kuitaat maneur Kerliver,
ar c'haera no var dro, e lavar cre d'an oll biza da eun ti
all e hoaz caeroc'h, el leac'h n'euz maro ebed, d'an oll e
tesc e vuarzu sellet, evit caout an eurusdet, ha dreist oll
d'e voad, dezo e preza, elasc da genta, dreist peb tra, eb
aoun rag ar maro, elasc rouantelez an Env: eno e c'hortoz
ac hanomp, di e c'haly ac hanomp, dre e bedennou, evel
m'en deuz gret dre e oberou. Euruz eta, var bouez lacaat
ar c'hristen se da dalvout; euruz ar vro, euruz ar barrez
el leac'h n'eo ganed, bennoz varnizi, a vezo lavared
bennoz ive var an Iliz eo bet hadezet enni, var ar re o deuz
e roed ha Iliz Jesus-Christ. Euruz ar re m'en devezo muia
sonañezou. Euruz kement o deuz tud hac a varv e Doue
(in vobis) var evel bugale vad d'an Iliz, evel on
merzer benniget. Mar gallsen digeri an arched-ma
dirag'h, e vellec'h e goit p'our dispenned, goulied e
trizec'h leac'h, divisket oa bet, hac en beo c'hoaz, gant ar
vandenn dud couantet, laosket gant an ifern var an Iliz
gatoie. O velet se, o velet e pe stus e oe lakeed e gorfic
paout gantho, ho kenta comz, keta, marteze, ne ve ket
da lavaret. Eurassa maro! ho comz kenta a ve eur gomz
a druez. Ouzt da se, ar maro-ze, a zo eur maro euruz.
O lacaat ar zoudard benniget er stad-ze, ken truezuz da
glevet ne reat deza nemet e lacaat er stad ma oe lakeed
Jesus-Christ gant ar loz vien. Rac-se peiruz ar seurt maro,
eur maro kev evel eun ino Zalver. Var ar maro-ma eta
eo e pelec'h e lacaat se vitu re joa. Baradoz o deuz eni
diouez, evit inta caniat d'advelas: Euruz ar re varo, pa
varvont Doue.

Eur velen e hoas, arabat barn ar pennad prezeg, gret
e Hanvec epad tir c'har-tur, arabat er barn diouz ar pez,
a lacaer ama. Ur brezeg ebken ha direnked evelen, a
zo evel evel. Gall fraou caer em euz lezed er meaz. Ne
sentan ama nemet d'ar red dre an unan ha n'edo ket o
silaou, hac a oa joa gantho, evel da prezeged e brezonec,
hac kement a gar avoalc'h o bro a lavaro evel da. Lavaret a
c'heller ive; el aoun rag beza dislavared gant den anaoudeg
ebed: biscoas, abaoe ma comzer brezonec, da lavaret eo
abaoue marteze ouzpen pemp mil bloaz, pa vezo sonjed
mad, piou a gomze; pe fene en deuz, eus piou, var betra
dirag piou e comze, ha penoz evit deuz comzed, nan
biscoas ar brezonec coz, ha brezonec a vir danvez an int
difazi ar deuz roed caeroc'h sin a vuez. Ar pez zo sur

ans ab istive, Hecov a d'elsovs; xill na b Hecovd 1991
ive, tud Hanvec, nemet digaloné: veentio a d'elsovs
pell, a d'elsovs, eus an d'elsovs, savad ar c'haera,
hac ar seurt se er talvez dezo: xill na b Hecovd 1991
lanc
-Di gazet'h Impartial e cavomp eul lizer, hag a zoug
kuez petra eo calon eur zouav ez a arme ar Pab. Dize
eve, eme an hini en deus laket moulla al lizer-ze,
scrie en eun doare calonekoc'h, na rei eur; bagou all
kentan en eun doare caeroc'h. Dize e ve da gunt
ten he lenn ep santou he galon o toma. ab tcom aneb er
Daou vreur a ioa var dachen vrezel Mentana e dro
ar zouavet. Unan anezho zo tizet gant an hollit mag
varf; eguile a scrie d'he c'hoar evit eas dezil ar c'hefor
trist-ze.

Setu ama al lizer:
Va c'hoar guer
Nevez recevet em eus daou lizer digant va mamm, unan
evit Per (he vreur), hag eun all eviton. Goude a ran-
ne ket eat beteg ennoe'h al hiri am o scrifet. N'ou
ket souezet gant kementse, rag scrie a rean euz a ve-
gnored ha doctus va lizer a vezo bet casset dre zouav
da lavaret eo dre ar Piemont, ha ne vezint ket bet lezet
da vont. En unan euz al lizer-ze, scrie d'an p'onteg
a viz here, e lavaren deoc'h oab laket da ofiser, hag e
c'houlennan daou ne deuz c'haeridun evit ennoim viza.
Mes lezomp kementse p'andraz e deo deua. Mall eo
din, hasta mag ra o docteur Armand Charce a ia en hent
varc'hoas, intus. Eh edl lizer all e vellec'h deoc'h petra
zo tremened eno, hag a pez ne rafe nemet a h'adur
deoc'h h'iro.

Hoguen gouzout a rez, va c'hoar guer, ar victorie
a goust alies ker, hag hon rejmiant zouaveten deus
collé meur a zen. Zouavet-ze, bet lazet evit goir, mes
maro in evel tud kaloneg, evel merzerien, ha mar deuz
eun tamig glac'har o sonjal ne vezo gueleo m'eur mar
pe eur breur, e cavan ez eo euruz an t'ad tud a ell lava-
ret gant saouez bezomp en anv Goude beza roet he
euz hag a bed nevidomp en dro deza, c'hui aze ha me ama,
gaera bloaveziou, en deuz roed ive a galon vad he c'hoad
var dachen ar vrezel. Comzer a rez, va c'hoar guer,
ec'h eil beza, braz ho glac'har mes a dra sur. Doue a
roi d'an dud-ze avoalc'h a feiz hag a galon evit aben-
dezh an sac'his-ze en devezo goulned digantha. An
dud calonek-ze a ioa dija en em voestlet da zone, ha
pell zo e t'iet gortoz ar pezo zo digouezet, hag ma beket
a vrezel ep, coll tud.

Rioland euz a Bloerimel so maro, tost d'Il, var dachen
Mentana, e kichen Monte-Rotondo, d'an trede a vis di-
Ar zouaved o deus brezelekeat, evel ma roed e pep
leac'h, gant courach hag a bris buez. Eur pennoz, an
eus gueleo Per em e kichen; lavaret e vije deoc'h, e
o'h he velet o tenna e save, keus gantho, dre em boa o
nemet va zabren. Evel glao, e goeze boulij, an holl
bihan oa an niyer ac hanomp hag ar gambadiane a ro
calz anezho. Cals zouavet se coezet, dindan o gortoz
kear edomp, hag e tennet varnhomp dre ar prenecher.

Pa voa echu an abaden, e voue roet din ar garg glac' harus da zestum ar re c'houllet hag ar re varo. Ar re varo a vije lavaret n'o divije bet poan ebet ; oll o doa an ear da veza eurus.

Unan a gaviz, hag eo te, va c'hoar guer, eo a gargan da rei ar c'helou euz he varo, rag te a dle caout calon gre. He gaout a riz evel pa vije azezet oc'h eur c'bleuz, he zivrec'h e croaz, he c'hinou anter zigor hag he zaoulagad savet gantha etrezeg an env. Eur voulet e doa treuzet he galon, mes ne velët ket an distera merc a boan var he vizaçh. Ar beleg a ioa em c'hichen a lavaras din : « Va mignon ker, eurussoc'h eo evidomp-ni ; eur potr oa euz ar re vella, hag edon o paonez rei dezhan va bennoz, » hag ar beleg he unan am sicouras d'he zouguen da eur chapel eno e kichen. Kemeret a riz eun tam euz he roched, euz he vleo, hag he scapuler, rag bez' ez int relegou eur merzer a zifenna he dud euz an env, a bedo evidhon, hag evidout ive. Ne gaf ket dit, va c'hoar guer, e ve tud ar merzer-ze dign a avi ? Ha piou a voar ha te as pozo pell avit outho ? Mes bez cre, hag e vezi, ha ne ket-ta ? hag e vezi eurus ? Ar zoudart-ze a gaviz, he anaout a rez, pidi a ra evidout, hag e tleez trugarecaat Doue, va c'hoar guer, rag eur merzer ac'h euz en da famill. Courach ha caloh, va c'hoar guer, Per a zo coezet evel eun den caloneg hag eur c'risten, ha din eo a avi....

Na vouez ket a zroulans din da veza casset dit ar c'helou-ze, rag ha me a elle he gas var eun d'am zad pe d'am mam ? Lezel a ran ganer ar garg poanuis da glasc an dro da rei dezo ar c'helou ankenus-ze. Gra evel ma sonji, pe lavar dezho epad eur pennad amzer ne deo nemet goullet. Erfin gra, da c'hallout evit na rai ket ar c'helou-ze a zroug dezho. Hirio e scrifan dezho, mes ep lavaret guer a guementse. Ne allan ket scrifa hirroc'h dit. Discriñ din dioc'htu... Kenta ma eli....

J. GUERIN. G. M.

Hano ar Zant evit ar Sizun-ma.

- DILLUN, 27 GUENVER. — Sant Ian Chrysostom, escop ha Docteur euz an iliz.
- DIMEURS, 28. — Sant Julian, Escop.
- DIMERC'HER, 29. — Sant Franséz a Zal, Escop.
- DIZIQU, 30. — Santez Martina, Guere'hez ha merzerez.
- DIREGNER, 31. — Sant Per Nolasc.
- DISSADORN, KENTA C'HEUVERER. — Sant Ignas, Escop ha merzer.
- DISSUL, 2. — Pevare sul goude ar Rouanez. Gouel ar Chandelour.

An Abostol hirio :

Mont a ran da gas va zel da bourchaz an hent dirazhan, ha kerkent o veur d'he Dempl ar mestr a glaskit, hag an zel a guevridiguez a c'hoantait. Setu em a tont, a lavar Doue an armeou.

Ha piou a ello epken sonjal e deiz he zonediguez ? Ha piou a ello choma za da zellet outhan ? Rag henvel e

vezo oc'h an tan a deuz ar metal, hag oc'h ar gueot a zervichid ar c'hommierien mezer. Henvel e vez da eun den a azev evit teuzi ha netaat an arc'hant ; netaat a rai bugale Levi, hag ho rento flam evel an aour hag an arc'hant tremenet dre an tan, hag e kinniguit d'an Aotrou sacrificou evel me o dleot. Ha sacrifics Juda ha Jeruzalem a blijo d'an Aotrou evel ma reñ sacrificsou an amzeri dremenet, an amzer goz.

Malachi III. 1. G. M.

KELEIER.

An Aotrou Troussel, person Sant Servés, hag an Aotrou Bernard, bet person e Meylard, so maro'er sizun dremenet.

E lod euz ar c'heriou marc'had, eme gazeten ar Meziou, ez eus bet discar var an ed en derveziou tremenet, ha ne ket az lavaret penauz eo digouezet kementse, pe dre ma voa ed aleiz, pe dre an emgleo euz ar varc'hadourien vras.

Ne ket en Algeri epken ez euz keraouez ; e Russi hag e Prus ez euz ive.

Guelet arer e coztez ar sao heol euz ar broiou-ze, cartieriou hag a varf an dud enho gant an naoun. An diekerien n'o deus na kezeg nag ejennet da labourat ho douar, ar pez a ziskuez ne dleer ket gortoz eost mad c'hoazier bloaz a zeu.

En darnvuia euz an departamanchou ez euz evesset voa bilhanoc'h an niver euz an dud iaouang a dle tenna d'ar zort er bloa-ma evit na dint boas da veza. Ar penn abeg a guementse eo marleze, ervez lod, an dra-ma. An dud iaouanc-ze zo ganet er bloas 1847 ; hoguen er bloavez-ze e voue eur goan criz ; ker oue' au beva, ha berren-terz vraz a voue etouez an duds, hag e varvaz eun tor braz a vugale nevez ganet.

Er bloaz a zeu ec'h eñ erruout ar memes tra dre ar memes abeg.

Eun nebeut tud iaouang euz a'guar Fribourg hag euz ar meziou tro var dro, a guemer skour dioc'h tud iaouang Frans hag a ia d'en em lacat e servich ar Pap.

Christenien catalig ar C'hanada a leverer a ra ho zonch da zevel eur vataillon evit arme an Tad Santel.

E mis meurs e leverer e vezo great Cardinal e nevez An Aotrou Arc'hescop Pariz hag an Aotrou Lucian Bonapart a vezo hanvel. Dioc'h ma leverer, ar Pap en deus sonch da henvel ; oupen ar re-ze, daou Cardinal all euz a Frans.

Lavaret a rer ive e tle ar Pap, divar he arc'har, he unan, lacat sevel er vrassa iliz so e Monte-Rotondo, eur volz pe eun dra bennag alkevit digas da zonch euz a stourmat Mentana. G. M.

TAOLEN FEIZ HA BREIZ EVIT 1867.

Nº 105. — 2 C'heuerer. — An dud difeiz a lavar ar virionez ep he zonjal. — Keleier. — Histor Zantel. — Eur scol noz. — Buez S. Samson. — Perag ar Vretonet. — Lizer eur zoudart d'he yam. — Keleier. — p. 9.

Nº 106. — 9 C'heuerer.

An dud difeiz a lavar ar virionez ep he zonjal. — Keleier. — Histor Zantel. — Eur scol noz. — Buez S. Samson. — Perag ar Vretonet. — Lizer eur zoudart d'he yam. — Keleier. — p. 9.

Nº 107. — 16 C'heuerer.

Abred pe divezad e vezer anaoudeg e kenver an dud vad. — Keleier. — Eur scol noz. — Buez S. Samson. — Iannic a vil vicher. — Levr al labourer. — Pouez eun nebeut bruzañ colo. — Keleier. — p. 47.

Nº 108. — 23 C'heuerer.

Gueladen vraz Paris. — Keleier. — Eur scol noz. — Buez S. Samson. — Iannic a vil vicher. — Fablen an anevalet clan. — Keleier. — p. 25.

Nº 109. — 2 Meurs.

An dud ep relijion sonezet avechou. — Keleier. — Lian ar Dall. — Iannic a vil vicher. — Ar Forest du. — Eñn Doue nevez. — Ar zoudav. — Keleier. — p. 33.

Nº 110. — 9 Meurs.

Mandamantan Aotrou'n Escop. — Keleier. — Itronetz Bro-Zauz. — Keleier. — p. 41.

Nº 111. — 16 Meurs.

An doue da rei a dal hirroc'h evit ar pez a roer. — Keleier. — Eur gouel braz e Amiens. — Brema ha guechall. — Unan a drubuillou ker. — Keleier. — p. 49.

Nº 112. — 23 Meurs.

Divarben an ebatou. — Aliou ha Keleier. — Histor Zantel. — Buez S. Paul. — Brema ha guechall. — Ar Feneant. — Mission Pleguien. — Keleier. — p. 57.

Nº 113. — 30 Meurs.

Doue neoc'hertos ket ato. — Keleier. — Eur procession dre vob. — Buez S. Paul. — An dilonteghez. — Iannic a vil vicher. — Keleier. — Danevel eur c'horn butun. — p. 65.

Nº 114. — 6 Ebrer.

Ar c'houlouchou e goufou an dud difeiz. — Missionou. — Brema ha guechall. — An dilonteghez. — Eur re voutou voulous. — Tonic. — Keleier. — An diaoul o tuta. — p. 73.

Nº 115. — 13 Ebrer.

Mout var arag. — Keleier. — Histor Zantel. — Buez S. Paul. — An dilonteghez. — Ar bleiz o kentelia he vap. — Keleier. — Marvailhou. — Eur c'hreg a gar dillad he vap. — Eun armel. — p. 81.

Nº 116. — 20 Ebrer.

Eost an amezeg caeroc'h. — Keleier. — Buez S. Paul. — Tonic. — Eur re voutou voulous. — Kuzul d'an tadou ha mamou. — Levr al labourer. — Keleier. — Beach eur Missioner. — p. 89.

Nº 117. — 27 Ebrer.

Guirionezou tenn d'an dud difeiz. — Keleier. — Buez S. Paul. — Liziri da dud divar ar meaz. — Mas. — Tonic. — Keleier. — Mam an Turc bras. — p. 97.

Nº 118. — 4 Mac.

Tud honest ep relijion. — Prezeguen ar Pap. — Histor Zantel. — Buez S. Paul. — Liziri da dud divar ar meaz. — Eur foll b' verza furnez. — Tonic. — Keleier. — p. 105.

Nº 119. — 11 Mac.

Ar feiz a lam ar c'hem. — Keleier. — Histor Zantel. — Ar vad da ober er c'heriou. — Laouic an dem. — Tonic. — Keleier. — Rieu ha Redon. — Impalaer hag ar serjant. — p. 143.

Nº 120. — 18 Mac.

Eur retired er Havr. — Divar ben an exposition. — Histor Zantel. — Ar vesventi. — Tonic. — Keleier. — p. 124.

Nº 121. — 25 Mac.

Diou daolen. — Keleier. — Eur lizer euz an Env. — Relegou an Aotrou Miltier. — Histor Zantel. — Liziri da dud divar ar meaz. — Tonic. — Keleier. — An tad Tank. — p. 129.

Nº 122. — 1 Even.

Carantez Jesus evit ar vugale. — Calon Jesus. — Keleier. — Eur pare buzudis. — Merzerien ar Japon. — Liziri da dud divar ar meaz. — Eun Dragon missioner. — Tonic. — Keleier. — p. 137.

Nº 123. — 8 Even.

Ar vezen anavezet dre he frouez. — Keleier. — Brema ha guechall. — Merzerien ar Japon. — Ganto. — Tonic. — Keleier. — p. 145.

Nº 124. — 15 Even.

Trede gourc'hemen. — Keleier. — Histor Zantel. — Merzerien ar Japon. — Mari Abivin. — Tonic. — Exposition. — Levr al labourer. — Keleier. — p. 153.

Nº 125. — 22 Even.

Doue a denn ar mad euz an droug. — Keleier. — Merzerien ar Japon. — Mission ar Ergue vraz. — Penaus scrifa gant. — Keleier. — p. 161.

Nº 126. — 29 Even.

An uzulierien. — Keleier. — E preleac'h o c'heus great lod ho fasc kenta. — Mari Abivin. — Brema ha guechall. — Penaus scrifa. — Paston. — Tonic. — Keleier. — p. 169.

Nº 127. — 6 Gouere.

Merched difeiz goassoc'h evit goazed. — Keleier. — Merzerien ar Japon. — Mari Abivin. — Liziri da dud divar ar meaz. — Levr al labourer. — Keleier. — p. 177.

Nº 128. — 13 Gouere.

An Ilis santel skedus. — Keleier. — Merzerien ar Japon. — Mari Abivin. — Eur gouel e Castel-Paou. — Keleier. — p. 185.

Nº 129. — 20 Gouere.

Prezeguen hon Tad Santel. — Histor Zantel. — Mari Abivin. — Liziri da dud divar ar meaz. — Keleier. — p. 193.

Nº 130. — 27 Gouere.

Gouelou Rom. — Keleier. — Merzerien ar Japon. — Brema ha Guechall. — Pascoñ he boched vras. — An Tabud etre Ian ha Per. — Keleier. — p. 201.

N° 131. — 3 Eost.

Distro an Aotrou'n Escop a Rom. — Keleier. — Merzerien ar Japon. — Buez Sant Visant Ferrier. — Mission Sant-Thegonnec. — Kelennadurez d'an dud iaouanc. — Keleier. — p. 209.

N° 132. — 10 Eost.

Satan oc'h ober catekis. — Keleier. — Buez Sant Visant Ferrier. — Mission Sant-Thegonnec. — Lizer. — Levr al Labourer. — Ar Paeron hag ar Fillor. — Keleier. — p. 217.

N° 133. — 17 Eost.

An Dud difeiz hag ar Chas red. — Keleier. — Histor Zantel. — Buez Sant Visant Ferrier. — Mission Sant-Thegonnec. — An Urziou roet. — Keleier. — p. 225.

N° 134. — 24 Eost.

An Dud difeiz ne blij ket dezho henori ar Zent. — Keleier. — Buez Sant Visant Ferrier. — Brema ha Guechall. — Liziri da dud divar ar meaz. — Eurguentel da beuliou tavarn. — Penaus gouzout pelec'h eus dour. — Keleier. p. 233.

N° 135. — 31 Eost.

Hag eat eo ar feiz kuit? — Lizer eur C'houeriat. — Doue a bourveo. — Histor Zantel. — Buez Sant Visant Ferrier. — Iannig a vil vicher. — Merzerien 1862. — Keleier. — p. 244.

N° 136. — 7 Guengolo.

An dud difeiz hag ar C'holera. Keleier. — Buez Sant Visant. — Ar C'holera missioner. — Iannig a vil vicher. — Liziri d'an dud divar ar meaz. — Keleier. — p. 249.

N° 137. — 14 Guengolo.

Lizer Escop Orlean. — Keleier. — Buez Sant Visant. — Brema ha Guechall. — Ar C'holera missioner. — Keleier. — p. 257.

N° 138. — 21 Guengolo.

Tud discredig, egredik. — Diner Sant Per. — Priziu a vertus. — Pardon ar Zalet. — Sant Iann hag Herodes. — Chapel da Sant Roch. — Keleier. — Marvaillou. p. 265.

N° 139. — 28 Guengolo.

Guiziou fall. — Keleier. — Buez Sant Visant. — Iannic a vil vicher. — Pardon ar Zalet. — Levr al Labourer. — Keleier. — p. 273.

N° 140. — 5 Here.

Stad trist an dud difeiz. — Histor Zantel. — Buez Sant Visant. — Iannic a vil vicher. — Ar Messaer Bertele. — Keleier. — p. 284.

N° 141. — 12 Here.

An Oferen ep ean. — Keleier. — Histor Zantel. — Buez Sant Visant. — Liziri da dud divar ar meaz. — Ar Messaer Bertele. — Keleier. — Lizer eur c'had d'he vap. — p. 289.

N° 142. 19 Here.

Goaperez troc'het. — Keleier. — Histor Zantel. — Scol Kervoazec. — Pardon Lesneven. — Levr al labourer. — Ar Messaer Bertele. — Keleier. p. 297.

N° 143. — 26 Here.

Izom da c'houzout al labour douar. — Keleier. — Merzerinti an Aotrou'n Escop Berneux. — Brema ha Guechall. — Ar Messaer Bertele. — Kimiad an Aotrou Mintier. — Keleier. — p. 305.

N° 144. — 2 Du.

An discar amzer. — Keleier. — An Dimezel venn. — Buez Sant Visant. — Liziri da dud divar ar meaz. — Ar Messaer Bertele. — Keleier. — p. 313.

N° 145. — 9 Du.

Perag n'eus ket izom a Bap. — Keleier. — Histor Zantel. — Buez Sant Visant. — Lizer divar benn an Assemble e Sant Briec. — Ar Messaer Bertele. Keleier. — p. 324.

N° 146. — 16 Du.

Lizer an Aotrou'n Escop. — Eun den stard. — Keleier. — Cantik ar Pap. — Ar Messaer Bertele. — Keleier. — p. 329.

N° 147. — 23 Du.

Tud difeiz digalon. — Keleier. — Buez Sant Visant. — Brema ha Guechall. — Ar Messaer Bertele. — Keleier. — p. 337.

N° 148. — 30 Du.

Var araog! — Keleier. — Brema ha Guechall. — Levr al Labourer. — Ar Messaer Bertele. — Keleier. — p. 345.

N° 149. — 7 Kerzu.

Carantez an dud difeiz. — Keleier. — Histor Zantel. — Buez Sant Visant. — Ar Messaer Bertele. — An daou Louarn. — Eun dro vuzudus. — Keleier. — p. 353.

N° 150. — 14 Kerzu.

Pedennot evit ar Pap. — Keleier. — Histor Zantel. — An Tan kenta. — Ar Messaer Bertele. — Keleier. — Kentel da eur c'hanfard. — Marvaillou. — p. 364.

N° 151. — 21 Kerzu.

Brezel etre ar re vad hag ar re fall. — Keleier. — Mission Goayen. — Ar Messaer Bertele. — Levr al Labourer. — Keleier. — Jardiner an Aotrou Olier. — p. 369.

N° 152. — 28 Kerzu.

Fin ar bloas. — Keleier. — Histor Zantel. — Mission Goayen. — Liziri da dud divar ar meaz. — Ar Messaer Bertele. — Keleier. — D'an Aotrou Kermarker. — p. 377.

N° 153. — 4 Guenver.

Ar Gristenien a glask honor. — Keleier. — Brema ha Guechall. — Eun Nosvez e Castel Rambouillet. — Lizer eun Abad d'he leaned. — Keleier. — Taolen ar Retrejou. — p. 385.

N° 154. — 11 Guenver.

Ar maro ne espern ket enebourien an iliz. — Keleier. — Eur C'hrouadur caret gant Doue. — Lizer eun abad. — Ar Virionez epad eun dervez. — Mestr clog'her Moscou. — Keleier. — p. 393.

N° 155. — 18 Guenver.

Ioulon Tud difeiz. Keleier. — An Aotrou'n Escop Pressigny. — Zouaved Bro Holland. — Lizer eun Abad. — Liziri da dud divar ar meaz. — Keleier. — p. 404.

N° 156. — 25 Guenver.

Enterramant an Aotrou de Quelen. — e Kemper. — e Hanvec. — Lizer eur Zouav. — Keleier. — Taolen. — p. 409.

PRIZ AN ED.

KEMPER. — 18 guenver.	PONT-NABAT. — 16 guenver
Priz ar c'hanf tur.	Priz ar c'hanf tur.
Guinis. 47 lur, 83 c.	Guinis. 48 lur, 54 c.
Segal. 44 lur, 22 c.	Segal. 43 lur, 96 c.
Eiz. 44 lur, 26 c.	Eiz. 44 lur, 50 c.
Ed-du. 8 lur, 66 c.	Ed-du. 10 lur, 66 c.
Kerc'h. 40 lur, 47 c.	Kerc'h. 44 lur, 50 c.
Avalou-douar 5 lur, 50 c.	Avalou-douar 5 lur, 43 c.

Ar Gerant : AR. DE KERANGAL.

Kemper, moulet gand Ar. DE KERANGAL, Moullet an Escopli.